

Kroaz ar Vretoned

KOUHANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skeud evit ar broioù estren hag evit ar Breiz keltiek.

RENEREDEN

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANOÙ-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigomer a^o ezo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GREN.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekeraio a Vreiz.
FURNEZ AN GREN.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het.
Ouspen ar Vez, e ve Pec'hed di
MIZAN.

BREURIEZ AR BREZONEG

Gouel Kervaria-Sulard

Disul kentañ, pemp a viz genver, e vo, en Kervaria-Sulard, ar gouel bet embannet amañ an 8 a viz kerdu.

Ar vugale eo bet kaset d'e Kroaz ar Vretoned a zo pedet da zont evit al lennaleg hag ar prijou. Piou bennak a ouïo lenn a zo zur da vean digemeret mat ha da vean paet, 'n eun doare bennak, evit ar boan an evo kemeret.

Deut holl eta, bugale, ha c'hoar, tadou ha mam-mou, tadou-koz ha mammou-goz, eontred, moer-bezed, kendirvi, kenitervezed, mignoned, deut da welet ar vugale evit renti d'e eun tam enor, ha kemer ive ho tammig plijadur.

Ne vo ket a brijou evidoc'h; mes Ar Yeodet 'n eus bet eun teod neve digant ar Mabig Jezus evit e zaeron mat, hag a gonto d'ac'h peadra da lakat stad ennoc'h 'vit ar bla pen-da-benn. Dir-Na-Dor an eus danzeet eur c'hoari-zac'h (pe tombola) hag eur bagad sonioù koant da ganen ha da werzan.

Deut eta ha na glasket ket digareou da souzan. Kervaria eo chans kentañ Breuriez ar Brezoneg ar bla 1908, hag hon devo, e skeud ze, muioc'h a joa outi.

Kenavo disul goude ar gouspero, e ti al leanezed.

BREURIEZ AR BREZONEG

Prijou Nedeleg evit ar vugale

Bet hon deus eun toullad respontcheu war ar pezh a c'houllemp breman 'zo ter zun :

Piou eo ar zant breton a garet ar muiian ha perak ?

Bet hon deus respontcheu eus Peurit, Callac, Carnoet, Keriti, Lanurvan; mes Plouagor a zo dilerc'het betek breman, ha Keriti 'zo manet berr ive, (n'eus nemet eur respont c'hoaz.)

Hirraet 'vo an termen da gas respontcheu betek an eil zul eus ar bla; goude, vo roet ar prijou.

Hastomp eta; n'eus man digoulzet c'hoaz.

Hetou a vlavez mat eur C'hernevad

C'hoaz eur wech, Breiz n'eo ket maro; Breiz na varvo ket! Setu eur C'hernevad koz, eur c'hristen mat, lenn a garante evit e Vro hag e yez, o tigas d'imp, en brezoneg rimet, mar plij, e c'hourc'hemmou a vlavez mad.

Trugare e laromp d'ezan... Ra gendalc'ho da skriva en brezoneg ha da zouten bepred ar Religion hag ar Wirione evel m'hen deus groet betek breman. Hen eo, en e barouz, ar zoudard kristen hag ar Breizad direbech. Doue hen paeo hag a vinnigo goude e vugale war e lerc'h.

AR YEODET.

BLAVEZ MAT !

Blavez mat a hetan d'an holl abeurs Doue; Ze glaskomp, a gredan, an eil hag egile; Gras d'ar Gouarnourien d'ober lezennoù mat, Da lezel ar Frankiz gant an holl, en peb stad. Ra vo hon beleien difennourien ar Fe, 'Vit ma renfont ar bobl herve lezen Doue.

Ra vo intent gwirion etre mestr ha mestrez. Etre tad, mam, bugel, mevel, ive mated. Segal bras en douar hag ive ker'h dru, dru, Gwiniz gwen ha pato, kenkoulz ha gwiniz du; Melchon kaer ha yeod-med ebarz park, prajeier, Saoud ha kezek a briz da garga ar c'hrevier... Hag evit achui, d'al labourer yec'hed, Ma c'hallo gant e boan, beva ebarz ar bed, Beva ebarz ar bed da c'hortoz mont seder D'an Nenvou, da viken, da veuli e Groner!

ITIEN AN D...

Pegoulz e sonjo pôtred Pariz

ennomp-ni, labourerien ?!

Ma 'peus c'hoant da welet liou an oabl pe sklerder an heol, eo red d'ac'h paea; red eo paea ar sklerijen a deu eus ar maez en ho ti. Kement ha kement e paefet evit kement ha kement a sklerijen; ze 'zo kaoz, eun darn 'zo bihan o yalc'h, kentoc'h evit paea re a sklerijen bep bloaz, na reont war o zier nemet eun tammik prenestr, a-walc'h evit kaout er da chom beo. Elec'h klask ober vad d'an dud, en eur wellat o yec'hed, ar gouarnamant, a gredan, an eus c'hoant lakat ane da vervel.

Kement-man, evit diskouel da bep hini ac'hanomp penos eo krignet an oll an de a hirie.

Ar c'hant a renker tenna eus eun tu bennak evit paea hon aotrone deputeed, ar prefejou ha kement labeer paper a zo.

Eus pelec'h tenna ar c'hant evit beva ane dizoursi? Eus godel al labourer! Bepred e chacher var borpant ar paour kez labourer. C'hoaz, goude bean paet mat an aotrone-man, mar plij, e renkomp forniz d'an deputeed paper lizer hag evaj, da bep hini leiz e gof. Mont a ran klanv pa welan war ar c'hazetennoù ar c'hoari a reont du-ze, en koste Pariz.

Ar re-ze a zo tud! Ar re-ze a gomz!... Ya, mes ped gwech ar bla e klevet-hu an deputeed o komz eus al labourer? Koulskoude, me gred penos al labourer a yev kement-all a friponed a dleje... bean sikouret eun dro bennak, evelkent?

Komzet a vo dioutan? Ya, pa vo eun dra bennak da denna eus e c'hodel, eun truj nevez bennak da lakat d'ean war e goin; a hent-all kammed!

Eun azen bennak, dre mac'h e en dour gant eur zamm dilhad, a wele e vec'h o pounerat; kroez molat a re, 'n e stumm.

Ha ni, n'hon deus ket, zoken, evel azen an istor, skiant a-walc'h da grozmolat, evit laret: « A-walc'h breman! A-walc'h a druajo, a gontribusion!... Paouezet breman!... N'hallan mui mont pelloc'h! Leun eo ar muzul! Pell'zo e c'houlennan, war gement ton 'zo, ma vo skanvaet d'in ma zamm, ha den na silaou ac'hanon! »

Piou a zo kaoz? Ha graet ho peus-hu evel azen an istor? Graet ho peus-hu eun hijaden, 'vit teul diwar ho tiouskoa eur zamm hag e oad o laret skanvat anean tremen daou ugent vla so?...

E keit-se, ni a zo debret gant fonksionerien digonsians. Ar fonksionerien eo ar vosen a zo o c'hilac'hari hon bro. Eizom a zo eus unan bennak, a dra zur, mes gret eur zell endro d'ac'h: en kement kongn a zo en hon bro, o c'haver prest da lakat o dorn warnomp. Ar re uhel ane eo ar

preved a zo o krignet kalon ar Franz! Ne gav ket d'ac'h eo poent bras ober eun tam c'hoennad d'e? Ar re-ze a zo tud ha na vo biskoaz lenn o c'hof. Kresk a c'houlennout bemde. Na soujont ket penos eo int 'zo kaoz, marteze, ma n'he deus eul loden eus o c'henvreudur da lakat dindan o dent nemet eun tam bara zec'h, ma 'man eur rum-all, gant kalz a vugale, er baourantez gri, prest da vervel, marteze, gant an naon!

Ar paour kez labourer a vo epad an de o c'hozezi, o trei hag o tizrei e barkeier; 'man ermaez, adalek ar heure betek an noz; na zavo penn ebet; labourat a raio bepred, enpad ma talc'ho an heol skedus an de war an douar, ha van ebet na vo gret anean, nemet evit e wapad; pellat a rer dioutan gant euz, (nemet de ar vot), evel ma pellaer eus eul loen bunumus bennak!

Unan bennak laro d'in :

Petra fell d'it eta, ma na welez netra a vad en hon bro?

Petra a fell d'in? Eur gouarnamant muioc'h leal evit an hini a hirie, tud hag a zello diouimp eun tam bennak, labourerien; tud hag a labour evit skanvat da bep hini ac'hanomp e zamm. Ma deufemp-ni, Bretoned ha labourerien, da 'n em uani eun dro bennak!

Mes diwallet da selaou blejadennou kement azen an eus diouiskouant hir! Pa reont fae warnomp, greomp fae warnne, ma n'haller ket laret diouimp ar c'homzou-man: « N'eus nag azen mui azenez, na diot na diodez a gement na gavfe e bar pe he farez! »

E. AN HENOKET.

SON AN DURZUNEL

Meur a wech hon mignoned hag hon lennerien vat o deus bet goulennet diganimp « Son an Durzunel ». Aketus dalc'hamad da renti servij d'an holl, hon deus lakat kalz a boan da glask ar zôn-man.

Laret an eus: kalz a boan. Evit gwir, digouezet eo bet d'in furchal kalz araok koueza war eur zôn goz, ankouaet kazi gant peb den. Skrivet an eus bet ter pe beder gwech da dri pe bevar lec'h; ar bedervel gwech, evelkent, eo dent d'in ar zôn war he hed, marvad, o vezan 'm oa he goulennet digant eun... durzunel yaouank!

Ar plac'hig-man tener, tener evel eun durzunel, savet fur, fur evel eun el, eur vouez d'ei evel hini eun eostig, a zigasas d'in ar zonig seul vuhanoch ma ouïe evelse ober plijadur d'hon lennerien. Gwir eo, hi ive a zo eul leunerez d'ar Groaz; hag holl ec'h ouveomp penos mignoned ha lennerien Kroaz ar Vretoned a zo, evel pa lavarfen, ezli eun tiegez bras, unanet gant diou garante, hini Doue ha hini ar Vro!

Trugare eta d'an dimezel X... Hon mignoned a deurvezo ma digaezi evit bezan chenchet meur a c'hir ebarz ar zôn. He dilhad koz a oa en druilhon hag eo bet digouezet d'in lakat d'ezli tam-mou dilhad a c'hiz neve. N'haller ket, hep ober noaz ouz ar brezoneg, skriva girion evel: *amors, achapel, tourmant, patant, fidelite, sinceran*, hag all... Ar girion-ma a zo *bris-brezoneg* ha pep Breizad, kenkoulz en skritur 'vel en komz, a dle tanfoueltri ane pell, pell dioutan.

AR YEODET.

TREDE LIZER EUS NAONED

Kenvroiz Ker.

Evit ar wech-man ne gomzin ket d'ac'h eus treo koz. Re a blijadur am eus bet, re frealzet eo bet ma c'halon gant an treo eus an amzer a vremen. C'hoant bras 'zo ganin da zisplega d'oe'h ar pez am eus gwelet ha klevet disul tremenet, er vodadeg breton savet evit lida hanter-kantved bla ar galoen-gelc'h brudet e reer anezi, en galleg, *Revue de Bretagne*, « Kaloen-gelc'h Breiz. »

Da genta, petra eo ar *Revue de Bretagne*? Hen laret a rin en berr gomzou.

Eur galoen-gelc'h eo savet hanter-kant vla 'zo gant eun den gwiziek meurberd hag eur breton kalonek, an aotro de La Borderie, evit beza eun ère etre ar Vretoned a gare o bro eveltan hag a gare studian istor Breiz hag an treo koz a gaver eleiz war hon douar, ilizou, kestel, mein-hirr, dolmen, hag all.

Darn a laro : Petra 'd'aly kement-se evidomp-ni? Daoust ha n'int ket hanter-sod, an dud-se, o tremen o bue o furchal koz vogerion pe baperou hanter-vreïn, hanter-debret gant al logod? Laret ket ze, kenvroiz ker. Ma eo anaveet ganeomp bueou hon zent koz, labourion uhel ha kalonek hon tadou koz, ar brezelion goneet gant hon roueed hag hon duked, dre labour an dud gwiziek-se eo e teuomp d'o anaout.

Nag a skouerion kaer ha talvoudus a lennomp en o levriou ha entan hon c'halonou! Ne vije ket eur gwir Vreton an hini na larfe ket, goude bean lennet an istorion kaer-ze : Daoust ha ne rin ket evel ma c'hendadou, pa 'man o gwad o dizek barz ma gwazied?

Evelse 'reomp-ni, barzed ha skrivagnerien breton : Perak emaeomp-ni, kement ac'hanomp, o pleal, o labourat noz de gant levriou ha keloennou, evit skigna etouez an dud karante Doue ha karante Breiz? Perak? Dre ma zo bet tud gwiziek meurberd en hon raok, hag o deus diskouezet an hent d'eomp, evel ma ra an tour-tân d'al listri war ar mor.

Hag ouspen-ze, ni, barzed, skrivagnerien, bemde o vale bro da gomz d'an dud, o skriva penadou skrid da ganad, da c'hoari, o hada en-o c'hreiz had mat ar garante-vro, penaos e c'hellfemp ni kaout amzer evit studia, evit klask 'barz al levriou koz danve an istor a displogomp d'ar bobl, ma ne vijemp ket sikouret gant tud hag a labour evidomp, evel ma ra ar veredien a drouc'h, a zerr, a zorn an ed evit ar miliner hag ar miliner a val anean evit ar fornier?

Evelse en em harp pep micherour ar spered koulz ha micherourien an douar.

Enor 'ta ha trugare hag anaoudegez vat d'an dud gwiziek a labour evidomp 'mesk al levriou koz, kuzet, daoubleget war an daol skriva, evel mederien war an ero.

Chomet on re bell da zisplega al labour mat a ra ar *Revue de Bretagne*. Trawalc'h am euz c'hoaz da gonta d'ac'h. Da genta, evel m'ho peus hen gwelet war *Groaz ar Vretoned*, ar zun diwezan, bean 'zo bet eur vodadeg dudius, da diou eur d'abarde. Goude prezegennoù dispar graet gant an aotro markiz Estourbeillon hag an aotro kont de Laigue, e oe kroget gant ar muzik, kanaouennou gallek, da genta, ha goude, re brezonek. Pebez dudi klevet hon yez menlet gant an holl! Pa zavas war al leur-c'hoari an dimezell Rion, hon c'haouez dispar, gwisket ganti gwiskamant ken kaer Pontaven, kredi 'ris gwelet eur rouanez o sevel, kement e oe straket an daouarn d'ei. Kanet ganti ar Brezoneg a zebtant yez an ele, ar yez a gomzer er baradoz. Ken c'houek, ken brao e teue ar girion hag an ton unanet; keo dereat ar muzik c'hoariet gant he c'hoar oc'h eila anei war ar piano. An holl a oe goneet hag a anzave, trec'het gant nerz ar wirione : « Ar Brezoneg a zo re d'ar Galleg evit ar c'hanaouennou hag ar varzoniez. » — « Biskoaz n'am eus bet kement a geun o vean hep gouzout ar Brezoneg, » a lare eun aotro pinvik bras eus Naoned. Evit gwir, me sonj penos, hep dale, ne vo ken bodadeg ebet da gana, en Breiz, hep ne vo kanet eun dra bennak en Brezoneg.

Ha pa welan kement-se en kêriou bras, pa welan tud a spered uhel o komz evelse eus ar

Brezoneg, oc'h ober melodi bro ha yez koz o zadou, penos hellfemp tremen hep c'hoarzin gant an dimezelligo e weler re ane 'barz ar bourko o vale, ar zulia, eun tammig koz lok war o fenn, goude bean gwerzet hollen pe moru epad ar zun, hag oc'h ober fae war ar Brezoneg, 'n eur drei o geno evel marmouzien : Je ne parle pas cette langue-là! C'est une langue de saouaches! « Saouache », ne gredan ket e vefen, dimezell, nag ho kerent, kennebeut, ha na gomzont, koulskoude, nemet brezoneg. Diwallet kentoc'h da gouean, c'houi, e renk ar « saouvached ». Bean 'zo tud en Paris hag a gomz galleg. — eur galleg brein, gwir eo. — hag a zo gwasoc'h evit morianed an Afrik.

Ne achufen ket, ma karfen displega pep tra. Arôk en em dispartia, e oe kanet ar ganaouen dispar-ze a zo eun ère etre ar Vretoned, *Bro goz ma zadou*; kaer 'oa gwelet an holl, savet en o zav, oc'h unani o mouez evit an diskan hag o luchal a greiz kalon :

O Breiz, ma Bro, me 'gar ma bro,
Tra ma vo mor 'vel mur 'n ho zro,
Ra vezo digabestr ma bro.

Pa ve dastumet Bretoned evit eun dra bennak, n'int ket evit 'n em dispartian hep azean, evel breudeur, da gaouzel kalon ouz kalon eus treo o Mam-Vro Breiz.

Evelse 'oe gret ive. Wardro hanter-kant e oamp unanet evit ar banvez 'barz ar gwellañ hostaliri eus Naoned, eun hostaliri evel 'n'eus hini gwelloc'h en Paris. Mat tre e oa ar gegin; gwelloc'h c'hoaz e oa ar prezegennoù hag ar c'hanaouennou. Belek hanter-noz e chomjomp da gaouzel, da gana, da diviza. Pa ve Bretoned unanet assembles, n'int ket evit 'n em zispartia. Erfin, red e oe laret kenavo an eil d'egile. Mes re a blijadur hon eus bet, ha me 'gred e hadkrogfomp eur wech-all. Gwelet hon eus petra eo an unvaniez. Pegent krenv e vijemp-ni, Bretoned, ma ouifemp en em harpa etrezomp, rei skoaz d'hon breudeur, beva bepred evel tud eus ar memez gwad. Kement-ze 'zo gret dija en Paris gant ar vreuriezh dispar a rer anei *Breueriez Breiz*; perak ne rafemp ket evelse en Naoned gant sikour *Kevedigez Breiz*? Evit miret ar sonj eus an darvoudou evurus, alies ve savet hospitaliou, levrديو; evelse rer en Bro-Zaoz.

Perak, evit miret envor hanter-kantved giniwelez ar *Revue de Bretagne*, ne vije ket savet en Naoned eun ti evit ar Vretoned? Evit sur, netra na blijfe muioc'h d'he rener kenta, an historian bras a gare kement e Vreiz, an aotro de La Borderie.

GWELTAS.

GLAC'HAR AN INTANV PAOUR

Krouer an Neny, an douar, sellet ouz ma glac'haz;
Ma stad a zo truezus aman war an douar,
Birviken nemet anken n'am o ken war ar bed,
Da c'hortoz mont d'ho meuli da balez an Drinded.

Gwechall, pa oamp-ni yaouanc, neuze ma gwreg ha me
Hon doa bet poaniet hon daou da zavel bugale;
Labourat a raemp hon daou, komer raemp dienez,
Gant aon e vankhe e netra d'hon bugaligon gez.

Savet hon devoa ane, na laran ket hep poan,
Me 'ye rei kalon d'al labour, bemde ha hep chan,
Ha c'hoaz e vijemp laouen, pan arru e an noz,
Etouez hon bugaligon, c'hortoz mont da repoz.

An de warlerc'h ar beure, goude eur heden verr,
Me 'ye adarre laouen 'tresek ma farkeier,
Goude han kinniget ma labour da Zoue,
Ha goullennet e vennoz war ma holl bugale.

Seblantout 'raemp evurus etouez hon faourante;
Ar bed a oa mat ganimp, o ya, dre c'hras Doue,
Mes eun devez, siouaz d'in, an Ankou a skubas
Ma fried ker diganin; ma c'halon a rannas.

Ma bugale, goude-ze, a zo bet dimeet,
Hag et pehini ane 'sambles gant e bried;
Ha me ma-unan, d'am zro, am eus renket ive
Dilezel ma zam menaj ha heulih ma bugale.

Ekeit am oa eur gwenneg, akwit da labourat,
N'eus forz gant pehini 'né me vije arru mat,
Evurus e oan gante hag i 'vije laouen
'Welet anon 'c'h arrouet er park en o c'hichen.

Breman, pan oun arru koz, o pebez chanchamant!
Pan oun ken 'vit labourat ha debret ma arc'hant,
N'houl hini 'né ma zouten, rei d'in eun tam bara,
Ma stad a zo truezus war an tam douar-ma.

Alies dimeus an noz, me a ouel 'n em gwele,
O sonjal na pegen kri eo deut ma bugale...
O sonjal 'barz ma fried 'man he c'hort' er vered,
Hag hec'h iou, a gredan, 'zo barz ar jaousted.

O Jezuz, Salver ar bed, sellet ouz ma glac'haz;
Me a 'zo eun intanv paour, aman war an douar,
Dilezet gant ma mibien, dilezet gant ar bed,
Gret 'ta ma'c'h in d'ho meuli da Vro 'n Eurusted.

Pardonet d'am bugale pere 'zo dinatur,
Rak me a bardon d'eze gant kalz a blijadur,
'Balamour d'ac'h, ma Jezuz, rak c'houi a bardonas
D'ho pourevien dinatur, pa oar'h stag ouz ar Groaz.

O bugale dinatur, c'houi a zo didrue,
Pa dilezet ho tad paour, arru war vord ar be,
En dienez, er vizer, da skuilh kalz a zaeron;
Koulskoude, pa ho save, 'nevor kalz a boaniou.

Diwallet, tud digalon, ho pe c'houi keun davat,
Da vean bet ken digar 'barz en kenver ho tad,
Gant aon na ve'c'h kastet d'ho tre en ho kozni...
Gredan ket 've gwad kristen ebraz 'nhoc'h izili.

Rak mar vijec'h gwir gristen, na oa ket diwanet
Al louzaouen c'houero-ze « ingratiri » hanvet,
Hastet eta he mougan, petramant dizale,
Hi a diwano ive 'n kalon ho pugale.

EUL LENNER.

AR BAJEN WENN

Eur marc'heg brudet bras eus an amzeriou gwechall. Thebald, kont ar Champagn, an evoa gret kement a dorfejou euzus, ken e oe zehauvet « ma an diaoul ». Eun de a deus koulskoude, goude meur a vlavez tremenet er stad reuzed-dik-ze, ma kemas an aotro Doue true outan, en abeg eun aluzen beunak gret gantan. Troet e galon gant ar c'hras, mont a reas da gaout eur manac'h koz brudet bras dre e zantelez, ha dizamma a reas ar bouez pounner a oa war e gouzians.

Ar manac'h mat-ze, leun a drue, a gennerez anean gwellañ ma c'hellas; mes ne oa ket evit rei d'ean an absolven, ken bras e oa e dorfejou. « Red eo d'ac'h mont da Rom, ma breur ker, emean. N'eus 'met ar pab, vikel-vras Jezus-Krist, evit o fardona. Setu eur feilhen baper; skrivet warni roll ho pec'hejou hed a hed. Diskouezet anei d'hon Tad Santel, ha ma ve, evel breman, ho kalon tuet evit ar vad, keun bras ganeoc'h d'ho pue dremenet, hen a roio d'ac'h an absolven, ha gant an alchone aour an eus bet digant Sant Per, e tigorod'ac'h dour ar Baradoz. » Senti a reas ar paour kez marc'heg.

Diwiska a reas e wiskamanchou pinvidik, tenna 'reas e gleze eus e goste, hag, eur vaz en e zorn, setu hen diarc'hen, diskabel, evel eur paour kez klasker-bara, war hent ar gêr veur, roll e bec'hejou kuzet en e vruched. Pell e chomas en hent. Da bep chapel brudet e pede, e klev e ofera gant ar brasan devozion; pep noz e c'houlenne, gant izelder a galon, aluzen eun tam bara ha lojeiz 'barz eur c'hraou dister. Eur roched reun warnan, eur zein binijen endro d'ez gorf, piou an ije anaveet ar marc'heg leun a fouge anveet gwechall, e pep bro, evit e rogente hag e galon kri ha kalet. Dre forz kerzet, dre forz daoulinna ha pedi, ec'h arruas e Rom. Mont a ra dustu da gaout an Tad Santel ha, daoulinet dirakan, e displogas d'ean, daelon en e zaoulagad, petra 'felle d'ean da gaout.

Tenna a ra eus e vruched ar paper oa skrivet warnan pec'hejou e vue.

O burzud! Netra ken na oa merket warnan. Gwen-kann e oa ar paper. Gwalc'het oa bet gant dour ar binijen gwirion.

Troet eus ar galleg ha kempennet gant

GWELTAS.

GOUEL NEDELEG en amzer gwechall

An oferen hanter-noz, en Normandi, er Provas ha lec'h-all, a oa eun dra gaer gwechall hag eun dra souezus evit an dud a vremen.

Gant gouel ar Mabig Jezus 'vije gret gouel ar veserien pe ar bastored.

Holl veserien ar vro en em glevete etreze hag a hanve eur mestr dibabet en o zouez. Henez a 'vije karget da dastum arc'hant evit prenan eur bara binuigel.

Da hanter-noz, ar bastored, gwisket evel pa vijent o vesa o denved, en em gave ouz toull dor an iliz leun a dud.

Pa vije achu an *Te Deum*, e tenent war gred'h gant an Iliz hag e kerzent treskek kraou ar Mabig Jezus, eun oan bihan gant unan ane etre e zious-vrec'h.

Gwech na gwech 'vije jachet war lost an danvad d'ober d'ean blejal.

Warlerc'h an danvad e teue kravaz ar bara binnet, kempennet kaer gant goleier ha rubanou. Ar c'hrazav 'vije warni 'vel eun tron hag a droe, ha war an tron ze 'vije ar bara binnet.

Ar vesaerien a brofe an oan d'ar Mabig Jezus hag ar bara binnet a re tro an Iliz hag a vije kinniget d'an dud.

Er Pikardi 'oa ar c'hiz ive gant ar vesaerien da ginnig eun oan gwen d'ar Mabig Jezus. An oan a 'vije binnet gant ar beleg e kerz an oferen; eus an iliz 'vije digaset d'ar ger war e giz ha laket er c'hraou el lec'h tomman; bevet vije gwelloc'h evit ar re-all ha lezet da vervel dre gozni. Herve ar greden, hen a ziwalle ar vanden eus ar blei.

Er Champagn, eo eur plac'hig gwisket en gwenn a roe ar bara binnet en oferen hanter-noz. Paner ar bara a vije ganti war he fenn hag eur golo a douge en he dor.

En bro Armagnac, war du Bourdel, ar fornie-rien a roe gwelloc'h d'o hostizien de arok Nedeleg. Ar re binvidik, hag e tigouee gante kaout meur a hini, a gase ane d'an iliz, hag e vijent binnet ha roet d'an dud gant oferen hanter-noz.

Er broiou-tost da Lourd, 'vije binnet pep bla, gant oferen hanter-noz, kouignou hag a vije miret pad ar bla da rei d'al loened, ma vijent klanv, ha dreist-holl, d'an denved.

Er Provans, 'n eur baronz eus ar Vaucluz, 'oa eur c'hiz hag a dec'he digant ar re-all.

De arok Nedeleg, an dud yaouank a dape eur pistiklaou hag a gase anean d'an otro person. Heman, goude oferen hanter-noz, a bigne er gador hag a loskae an evnig da vale dirak an holl. Eur ruban ru 'vije laket d'ean ouz e droad.

En Rouen 'vije gret gwechall gouel an azen. An azen a oe gant an ijen mignoned kentan ar Mabig Jezus en e graou.

An Testamant koz a gomz ive d'imp eus ar profed Balaam hag a oe kaset gant ar roue Balac da dol e valloz war bobl Israel. Mont a re, pignet war eun azenez, pa deus houman da stourm outan en eul lavaret: Perak e skoez ac'hanon evit an derved gwech?

Endro d'an azen e vije bodet an holl brofeted o deus diouganet bue ar Messias. Eur zon 'oa gret zoken, e latin, en enor d'al loen, hag a vije kanet war e dro.

Setu aze eun dastumaden eus eul lod a gizioù Nedeleg gwechall.

Brao ha dudius e oant, peurvuian, rak ar fe hag a garante a vleunie en o zouez hag a dole c'houez vat warne. Breman eo re dreut ar c'hallou, re dizec'het eien ar fe evit d'imp da c'hallout tanvat kizioù evellen. Gwaz a ze!

Gant ar c'hizioù koz nag a joa hag a blijadur bevan 'zo et endro!

E...

LAVARIOU KOZ A BEP SEURT

Biskoaz hano mat ha gounid bras
En eun kevelep sac'h na antreas.

Eur plac'h penn-skanv ha rederez
N'e ket mat d'ober tiegez.

Eun hevelep si, e gwirionez,
A ra dibaot gwir blas'h-tiegez.

Plac'h a gemer a zo gwerzet,
Plac'h a ro a zo dilezet.
Na ro 'ta da botr an distera tra,
Ha na gemer digantan netra.
Gwall-eur kalz a blas'hed a arru
O rei, o kemeret a bep tu.

Paourentez a dosta e kuz
Oc'h kegin lipous ha re zrus.
Dibaot eo ar bardonerien vras
Hag a zistro sent d'o zi, siouaz!
N'ez eus ket a win mat heb li,
Na vertuz heb gwariz.

'N nep 'zo laouen gant bara zeac'h
A gav da heuri e 'p'p' leac'h.
Ne fougeit den eus e lignez,
Nag eus e nesanted vras ivez.

Ar wreg, an arc'hant hag ar gwin
O deus o mad hag o bilim.

Dibaot e c'hell beza laouen
Gwreg he deus eur pried diskempenn;
Mar deo egzaz ha drouk,
Her roio alies d'ar groug.

Gwreg a ziroufen, pa gar, he min,
Ha, pa gar, a ouel noz ha mintin.

Dibaot er bed-man e weler
Vertuz vras e plac'h dibreder.
Nag e paotr didalvez ive,
Dibaot eo gwelet an dra-ze;
Mamm an holl dehou fall, e gwirionez,
Eo, eme ar fur, an didalvoudegez.

Ma na peus ket a zouben da zibri,
Bev gant bara evel ma c'helli.

Den ebet na gred beza re eurus,
Gant feiz, arc'hant ha spered skiantus.

Ar madou a zeu dre hent fall,
A zo dieaz bras da zioall;
E gwirionez, n'e ket eaz pell miret
Ar madou a vez gwall-gemeret;
Dibaot bras ez eo o gwelet,
Er bederved lignez diazezet.
Mar fell d'it 'ta destum madou padus,
Na vez hirviken laer na mac'houmus.

Evit kenderc'hel da binvidigez,
N'hen taol morse dre ar prenestr ermèz,
An nep a lam ato hep lakaat,
Kalz a dra pell en e yalc'h na had.
Mar fell d'it destum madou,
Pa lamm unan laka daou,
Pe gra kalz gwelloc'h, na lam biken,
Ha laka ato unan ouспен.

Diasoc'h eo plega gwezzenn,
Eget ne deo terri plantenn.
Pleg da vugel en e yaouankiz,
Hag, heb mar, her plegi en da c'hiz.

Yaouankik, kelen mat anezan,
Ha dalc'h mad ato start outan.
Ma ne blez neuze d'it-te berr ha krenn,
N'her graei ket e kosni ha pa doufles e benn.

Abarz mervel, rei holl dra e di,
A ve da eun den kalz sotoni.

Dalc'h ar c'hief en da zorn p'eman,
Hag e tenor da domma outan,

Eur wreg 'zo hozzet da eva,
A hep hent oll ne dalv netra;
Oc'h pep lealded e serr dor,
Hag oc'h pep pec'hed e tigor.

Na laka droug e gwreg ebet,
Ma na fell d'it beza kollet,
Dreist pep tra na egzaz re anezi,
Dindan boan beza duet oll ganti.
N'ez eus aer viber ebet gwasoc'h,
Na leon, na dragon skrijusoc'h,
Eget na deo eur plac'h e kounnar;
Diaoullit d'he egzaz, neb a gar.

KENTEL

Lakit da dalvout kement-man holl,
Hag e veot ar furra eus an holl.

KELEIER EUS AR BED-OLL

An eiz devez warnugent. — Ministr ar Brezel an eus kaset kelo d'ar Sened e oa e sonj gervel, ar bla 1908, d'ober eiz devez warnugent, ar re eus ar c'hlasou 1901 betek 1904 ha na oant ket bet galvet; d'ober seiteh devez, ar rezervisted hag a zo da vont 'vit an eil gwech d'ar c'hazern; evit nao devez, potred an trizek devez.

Ar « Chartreuse ». — An Tadou Chartreuzed o devoa eun doare kuz d'ober eun evaj eus ar gwellan hanvet « Chartreuse ». Gwerzan reent an evaj-se, ha gant an arc'hant e reent kalz a vad. Pan int bet kaset ermeaz a Frans, al « liquidateur » Lecouturier a oa kas laerez d'e ive o merk fabrik.

'N em laket 'n eus bet da werzan a ziavez bro evaj gant an hano a « Chartreuse ». Mes en Bro-Saoz, en Alamagn, en Beljik, al lez-varniou o deus diskleriet e oa faoz an evaj-se, ha bemde ve tapet en kontravansion ar re a werz anei.
Herve, al « liquidateur » a gollo gant se lies a vilion.
Setu 'n em dapet al laer!

D'an tadou ha d'ar mammou. — Lezvarn Dijon a zo o paouez rei eur varnedigez hag a zo ezom da embann anei dre bevar c'horn ar vro.

Eur mestr-skol an oa drouk-komzet eus ar relijion dirak ar yugal lavaret ne oa Doue na galloudus na mat. Barnerien Dijon o deus kondaonet anean diwar an artikl 1382.

Klevet eta gant ho pugale, tadou ha mammou, petore kenteliou a glevent er skol, ha ma ve roet d'o kenteliou fall, kaset ar mestr-skol dirak ar barner. Al lezen a zo a-du ganac'h.

Maro ministr ar Justis. — An otro Guyot-Dessaigue, ministr ar Justis, a zo maro a greiz ma oa o labourat er Sened gant ar vinistred-all.

Sikouret an eus bet ober kalz a droug, hag evitan da vean ministr ar Justis, ar Justis hag hen n'o deus ket bet 'n em glevet nemeur.

Et eo breman da reiti kont d'an Hini a bouez oberou pep den gant gwir lealded. Gras d'ean da vean het digemeret mat, rak spontus eo, 'vel malar ar Skritur, kouean etre daouarn an Doue beo.

Fevar den dindan an douar. — En Toulon, warlerc'h an doueier, an douar 'zo tec'het da risklan 'dal ma ve toullt. Dilun e oa pevar den o labourat 'n eur vengleuz, pa distagas eur pikol boum douar ha pakan ane dindan.

O fevar int bet gwall dizet; mes fians a zo e teuo tri ane da 'n em gavout.

Eskibien Frans. — Eskibien Frans a zo e sonj 'n em vodan e Paris arok ar C'hoareiz 'vit 'n em glevet war ar pez a vo d'ober adarre ar bla deu. An eskibien lodennet etre peder benden a studio etreze stad ar relijion er vro da c'hortoz 'n em gavet holl en Paris.

Brezel ar Maroc. — Er Maroc, ar jeneral Drude o vean koueet klanv gant an derzien, 'zo renket lakat 'n e blas ar jeneral d'Amade, rak an Arabed na zistanont ket hag a zo prest da hadkregi 'dal kavont tu.

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

KEMPER. — Medalennet gant ar Pab. — An otro Pontgier Chamaillard, senedour ar Finister, a zo bet medalennet gant an Tad Santel ar Pab. Kaset eo bet d'ean medalen sant Gregoar ar Meur, abalamour d'e fe ha d'e nerz-kalon o tifenn ar relijion hag an urz vat er Vro.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

BOULVRIAK. — Foar neve. — An 21 genver e vo eur foar vras e Boulvriak.

Pion bennak a yei d'ar foar da werzan an evo e zigoll digant ar strollad savet evit hadsevel ar foariou koz.

GWENGAMP. — Tizet gant eur c'harr. — Diriou, an intanvez Robert, eus Sante-Croez, a oa o vont e ker, pan arruas ganti gwetur an otro Lorgéré, eus miliu-foul. Heman a bedas anei da vont er c'harr, mes pa oa o pignal, an aneval a yeas war rok hag e oe diskaret an intanvez Robert dindan ar rod ha kignet he fenn. Red e oe d'ar vedesined hadgriat ar c'hroc'henn.

BREZ-UHEL

SANT-BRIEK. — Hanvet habiten. — An otro Ferdinand Vallée, breur an otro Vallée, perc'henn Kroaz ar Vretoned, a oa letanant er 4^{ed} tennerien aljerian. Et e oa d'ar brezel d'ar Maroc, hag eno eo bet hanvet habiten. Hon gourc'hemen-nou d'ean.

Eur c'hole hag a dalv e bouez arc'hant. — N'eus ket pell, e Jersey, eur c'hole hag an evoa bet priz a oe gwerzet pemp mil lur warnugent. Digaset zo bet da Sant-Briek unan eus ar memes gouen hag a zo bet gwerzet d'eul labourer eus Ploufragan. Bean eo eus ar ouen yell, pe Froment hep meskaj ebet.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Kalz amzer am eus kollet o furchal ar c'hoajou,
 'Klask tapout an durzunel kousket war ar bran-
 [kou ;
 Kollet am eus ma amzer, rak tennet am eus fall,
 Tec'het eo an durzunel ha nijet 'n eur c'hoat-all !

Dious an noz, dious ar mintin, me a glev lapoused
 O kana, o fredoni, war veg ar gwe pignet ;
 Nan eus nikun aneze a bikfe ma c'halon
 Evel mouez an durzunel o ouela d'he mignon...

— « Petra, turzunel yaouank, a drubuilh da galon ? »
 — « Kollet am eus, emezi, ya, ma gwella mignon ;
 Mar na deu ar chaseour d'ober d'in-me mervel,
 E varvin gant ar glac'har d'am mignonig fidel ! »

Gwelet am eus o vervel an durzunel garet,
 Rannet e oa he c'halon, rannet ha glac'haret ;
 N'he huanad diwezan he deus c'hoaz lavaret :
 — « Ah ! ah ! ma mignon fidel !... » Ha kerkent eo
 [marvet !

Mezeller eus ar c'haeran ha skler, e gwirione,
 Kentel ha skouer ar gwella dimeus ar garante :
 — Nan, ne varvin ket kontant ma ne varvin fidel !
 Birviken na ankouañ maro an Durzunel !

AR FRANMASONED

Hon dever eo en em zifen ouz ar re a glask
 hon bresa. Beac'h eta d'an enebour ! Hogen piou
 eo an enebour ? Eun nebeut bloaveziou a zo, Leon
 Gambetta a lavare : « An enebour eo ar beleg ! »
 D'ar mennoz fallak-se respontomp hirio : « An
 enebour eo ar franmason. » — Petra eo ar fran-
 mason ? Kemerit eur gaouen, troit anezi ouz an
 heol e-kreiz an deiz, hag e welot ez eo dall-put,
 n'he deus galloud ebet anezi he-unan. Kemerit
 hor franmasoned, henvel int ouz ar gaouen. Ne
 vije nemet diskuilh al laboused-noz-man d'ar
 bobl evel m'emaint, gant o c'holierou distronset
 kaer, o zavacherou krec'hin broc'hed, o loa-van-
 son, o frezegennou leun a gasoni, o oberou a
 zismantir hag a varo ! Eur youc'hadeg a zoujer a
~~degenne~~ ~~neuz~~ eus eur penn d'ar penn-all d'ar
 vro ; oc'h o diskuilh hor befe o lazet. Her gou-
 zout a reont, setu perak e welomp anezo oc'h en
 em zouara evel ar gozed. D'eoemp-ni eta d'o lakaat
 da vonet er-meaz eus o lochennou. Iliz Franz na
 gavo ar peoc'h hag ar frankiz nemet diskaret a ve
 lochennou ar franmasoned.

Meur a gant vloaz a zo int en em zilet e-touez
 ar gristenien. Evel ar fals-doktored a zo kont anezo
 en Aviel, deuet oant, war o meno, da ziboania ar
 bobl, da zikour ar beorien, da zigas an eürusted
 hag ar frankiz war an dour, da lakaat da ren ar
 peoc'h hag an unvaniez e-touez an dud. Ar feiz
 kristen, emezo, na dalie netra war an dra-ze.
 Dindan ar promesaou kaer-ze ez oa kuzet eur
 poezon bilimus ; kroc'henn an azen a c'holoe al
 leon. O gwir lavar eo : « Brezel da Zoue, d'ar
 Gristenien, d'ar Mad ! » Setu chaden o unvaniez !

En amzer-ma e seblant dare an eost evito ; gant
 taoliou a gleiz hag a zeou, e sankont ar c'hleze e
 kalon ar Franz kristen. Ouz ar vugale, dreist-oll, eo
 kounaret ar bleizi-ma dislonket gant an ifern ;
 lavaret e ve o defe naon du eus neon bugale hor
 bro.

Gwelit nak a vistri gristen a zo bet stlapet er-
 meaz eus o ziez, gant archerien didruez. En-dro
 d'ezo ar vugale a lenve ; ar mammou a youc'he
 forz : « Frankiz ! frankiz ! Lezit ganeomp an tal-
 voundusa eus an holl vadou : hor feiz ha feiz hor
 bugale ! » Gouzout a rit penaos e oa respontet
 d'ezo : dre daoliou kil sabren, dre daoliou bann
 fuzul. En amzer-ma ar vugale a zo muoc'h d'ar
 c'houarnamant eget d'o zadou ha d'o mammou ;
 dre e skoliou dibater e sav anezo hervez e zonz,
 heb en em lakaat e poan gant kreansou o c'herent.

Ar vistri int, ha treut eo ganto ar peuri evit an
 dud eun. C'hoant o deus da gas Doue er-meaz
 eus ar vro, hag d'e heul ive, peb urz vat, ha pep
 honestiz. Lezen villiget an disparti great neket e

Kambr ar deputeed, nag er Sened, mes elochen ar
 franmasoned, « rue Cadet, Grand-Orient », a zeu
 da laerez betek zoken an dud varo, eat laouen eus
 ar bed-ma, o kredi ez eant da gousket e peoc'h e
 kalon douar o bro...

Madou menech'h, ilizou, beleien, gwerz ofer-
 nou evit an anaon, pep tra a zere outo. Eun dra
 'zo koulskoude hag a lezint ganeomp pe e plijo
 ganto, pe ne ray ket : ne ziframmint ket an enor
 diganeomp.

Eur pennad 'zo, eur beleg a Franz a yoa daou-
 linet dirak hon Tad Santel ar Pab hag a lavare
 d'ezan : « Tad Santel, hon lakaat hoc'h eus war
 ar c'holo. » — « Penaoz an dra-ze ? eme Pie X
 souezet ! » — « Ya, eme ar beleg o kendelc'hel
 gant e gaoz, hag o trugarekaat a reomp, rak ma
 n'ho piye hon lakeat war ar c'holo, hon enebou-
 rien hon lakea war an teilh ! » War golo kraouig
 Betleem eo e c'hanas an Iliz Santel, gant ar Verb
 en em c'hreat den, ha war golo paourentez he
 eskibien hag he hanter-kant mil beleg eo e adne-
 vezo ar vuez e kalon Iliz Franz.

Eun dra gaer eo gwelet Iliz Franz, gwall-gaset,
 laeret gant ar franmasoned, ha ken stag ha bis-
 koaz ouz ar C'hrist Doue hon Tadou.

N'eo ket mouget-tre c'hoaz, en hor bro a Franz,
 sked ar stered e bolz an nepvou.

Mennoz ar franmasoned eo ober sklavourien
 ac'hanomp ; ha kement-se, a daoliou « liberte »
 mar plij ganeoc'h !

War zav pelloc'h, evit yac'haat an aezen vrein
 o deus c'houezet war hor bro a Franz. En em
 unanomp dindan askell hor pastored evit beza
 krenvoc'h ; n'ema ket ar mare d'en em zispenn na
 d'en em zebri kenetrezoomp, mes d'en em voda, da
 gerzet an eil e dourn egile : *Unvaniez a ra nerz !*
 Tenn e vezo ar stourmad, n'eus fors ! Arabad eo
 fallgalon. Dalc'homp start d'hon labour, evel ma
 rea hon tadou koz gwechall, pa labourant da
 zavel hon Ilizou-Meur. P'odeveze klasket en douar
 an diazez eus an iliz a felle d'ezo kinnig da Zoue,
 ne ehanent da labourat nemet ken pa welent an
 daour dour dantelezet gwintet uhel en oabl glas,
 ha ma c'hellent pelloc'h lakaat ar groaz da lugerni
 war ar Vro.

PERRIG.

BRIZ-BREZONEG

Eun de, me 'gavas war ma hent
 Eur c'hrokant stipet
 Ken 'vankiz krewi gant ar fent
 Ouz e welet.

Dilhad kaer a oa war e choug,
 Seurt 'weler ket ;
 Mes toull 'oant, ha gant paper stoup
 'Oant peseliet.

— Penos 'ta, moun-me, gant paper
 'Man breman 'r c'hiz ;
 Da beselian dilhad mezer,
 Dilhad a briz ?

An dud a c'hoarze war e goust,
 Ha bep damant ;
 Sell, 'me, sell 'ta 'r poñr moust !
 Sell ar c'hrokant !

Warnoc'h hoc'h unan, Bretoned,
 C'hoarzet ive,
 Rak ar c'hrokant a disprizet,
 Sur eo c'houi e.

Bean 'peuz eur gwiskamant kaer,
 Ho brezoneg,
 Ha pa ve toull, hen peseliet
 Gant koz galleg !

Ha, koulskoude, 'n ho yez piavik,
 C'houi 'peuz eleiz
 Giriou koant, komzou birvidik,
 Doareou reiz.

Klasket-e, furchet gant preder,
 Hag e kavfet,
 Da beselian, tammou mezer
 Pez a garfet.

Mar ouzoc'h neuze o stagan,
 C'houi a reio,
 Gant ho yez koz, ar yez koantan,
 'Vo 'n holl vroio ;

Eur yez ne c'hoarzo ken an dud
 Ouz e glevet.
 Eur yez kaer evel eur burzud,
 Yez an éled !

T... eus Pl...

Trugare kalz d'hon lenner evit e bezig ken
 gwirion ha ken dereat !

Me zonz an holl a intento breman petra eo eur
 yez mesket evel ma klever re alies en geno ar
 Vretoned.

Setu aman c'hoaz, warlerc'h, eun toullad doareou
 fall a ve laret aman ha du-hont, *pec'hejou eneb*
ar yez.

Laret :
 Eur plac'h drouk.
 Ne laret ket :
 Eur plac'h mechant.
 Laret :
 Pa gavin toull pe tu da vont du-ze.
 Ne laret ket :
 P'am o occasion da vont du-ze.
 Laret :
 Hennez eo skouer ar re-all.
 Ne laret ket :
 Hennez eo model ar re-all.

Laret :
 Tolet am eus ple eus se.
 Ne laret ket :
 Apercivet am eus ze.
 Laret :
 N'e ket hirie hepken.
 Ne laret ket :
 N'e ket hirie seulamant.
 Laret :
 Eun den tñr.
 Ne laret ket :
 Eun den vif.

Laret :
 Dic'haouet oun bet pe bet am eus ma digoll.
 Ne laret ket :
 Didomajet oun bet.

Laret :
 Ne vo gret tamall ebet d'ac'h.
 Ne laret ket :
 Ne vo gret reproch ebet d'ac'h.
 Laret :
 Eun den diwar ar mēz.
 Ne laret ket :
 Eun den diwar ar c'hampagn.
 Laret :
 Krenvoc'h eo Yan 'vit Per.
 Ne laret ket :
 Fortoc'h eo Yan 'vit Per.
 Laret :
 N'e ket red ober ze.
 Ne laret ket :
 N'e ket nesesser ober ze.

GOULENNIT

E Ti-Moulerez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, ball Charner, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotrou abad	
BREB, goloann kartonz ha skeu- dennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegenn war Buez ar Vro, gant Job an Har.....	2 gwenneg.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneg.
Buc sant Anton a Badou.....	5 —
Pedennoùigoù ha kelennadurez d'ar vugale.....	2 —
Menzerenti an Tad Perboar.....	1 —
Buc an Tad Perboar.....	1 —
Al leaz.....	1 —
Moulodi al labourer.....	1 —
Gwerz sant Milto.....	1 —
Gwerz sant Koneri (skeudennet).....	1 —
An diaoul-paoñr.....	1 —
Kan an Islanded. Kentoc'h mervel. Peden ar vartoloded. Gwerz sant Kemo, hag all.....	1 —

E wennun diskar ar pris evit meur a hini.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù heltek.

RENERIEN

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer aezo.

Ar Brezonek hag ar Feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GKEIZ.
Gant Brezonek eo deud ar Feiz.
Gant ar gallekezaio a Vreiz.
FURNEZ AN GKEIZ.

Dalc'hit bepred d'ho Brezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma vo trec'het,
Ouspen ar Vez, e ve Pec'hed d'
MILIZ.

vugale Breuriez ar Brezonek hag he madobe-
tourien.

'Vit kaout lod en kement-all a vadou hag a
zikourioù, n'an eus pep bugel nemet 8 real ar bla
da rei.

Pelec'h eman ar bugel ha na zerr ket kalz
ouspen 8 real ar bla, gwenneg aman, gwenneg
da-hont, gant an de-kentan 'r bla, ar pardonioù,
ar gouelioù?...

An arc'hant-se 've laket en podig Doue, peotra-
mant roet d'ar vam. Ac'hanta, ar vam a lako
raktal 8 real eus he godel, hag ar pôtr liban, ar
plac'h vihan a baeo d'ei tam ha tam, dre ma
ligoueo gantan kaout eur gwenneg bennak.

Ha neuze, c'hoaz eur wech, töllet plê penoù ar
potr, ar plac'h merket war roll Breuriez ar Bre-
zonek o devo eur gazeten, prijou, eur c'haier 'vit
man, deskamant 'vit man war galz a dreo, war
Istor Breiz, war an Istor zantel, war istor an Iliz,
war ar c'hân... Daoust ha ne dalv ket an treo-ze
holl kalz en tu-hont da 8 real ar bla, p'eo gwir
Kroaz ar Vretoned hec'h-unan a goust 16 real?

Disfians ebet nag aon ebet da gaout

Breman, c'houi c'houi ganin: N'hallet ket gou-
nid kalz a arc'hant oc'h ober an dra-ze?

Ni, etrezomp, en Breuriez ar Brezonek, n'omp
ket kas gouid arc'hant; n'eo ket 'vit hon godel, a
dra zur, a reomp kement-man, mes evit mad
Bugale Breiz;

'vit mad o c'herent, 'n eur rei d'ê zikour da
zevel o mibien;

'vit mad Breiz-Izel, ma vo gret d'ei muioc'h a
enor gant an dud 'zo o lout ebarz, evit gant ar
re 'zo o vont endro;

evit mad ar Relijion, rak evidomp-ni, Feiz ha
Breiz a vo bepred breur ha c'hoar ha ne voint
biken dispartiet.

Ma teu kalz a vugale da lakat o hanoio, ni 'n
em denno hag a gresko ar prijou hag a gaerao ar
gouelioù, koulz evit an dud vras 'vel evit ar vu-
gale...

Mes, marteze, tadou ha mammoù, ho peus
c'hoaz eun tam disfians; aon ho peus ne ve kaojou
kaer a gontfemp d'ac'h. N'ho pet aon ebet, rak,
da gentan, ni n'omp ket *dieroidi*, galomperien o
reded eus an eil bro-d'eben, na, zoken *diavezoù-
riou* deut da chom en ho touez, na marc'hadou-
rien o jachan war ho kodelloù; ni zo Bretoned,
ha, zoken, vugale labourerien, peurvuian, bet o
chom a-viskoaz en ho touez.

D'an eil, töllet plê mat penoù ar pezh hon deus
c'hoant d'ober a vo diazezet mat war ar pezh hon
deus gret betek hen.

Betek hen, aboue dek miz so, ni hon deus gret
gouelioù ha roet prijou en 6 parouz, dastumet
daou c'hant a vugale ha dispignet gante endro
da gant skoed.

Kaset hon deus d'ê prijou, ar gazeten, hep n'ez
eus kousket d'ê gwenneg ebet; mes, evel ma la-
vare d'ig disul eun tad hag eur vam en eur rei
d'in o eiz real 'vit o merc'h, « n'heller ket pad
da rei hep goul »; ha neuze, 'vit ma vo gret ar
vad, eo deet da bep-hini lakat eus o du.

Renerien Breuriez ar Brezonek.

N. B. — Pedit reomp ar *vistri-skol vreton ha
kristen koulz a Leon 'vel a Dreger*, da lakat ar
muian ma hallfoint eus o bugale war roll Breu-
riez ar Brezonek. Breuriez ar Brezonek a vezo
eur skoed evit ar vistri ha mestrezed skol, koulz
evel 'vit ar c'herent.

Pa vo dek bugel eus ar menez parouz, vo gret
eun eur gouel ar bla, d'an nebeutan. Ar parou-

zioù n'o devo ket dek bugel er Vreuriez vo kaset
d'ê prijou eur wech ar bla, mes ne vo ket gret a
ouel.

Goude miz genver, ne vo ken kaset a gazeten-
nou 'vit man.

Hogen, adalek miz c'houevrer, ni a grogo en
Kroaz ar Vretoned:

Gant pennadour war al labour-douar,
gant sonioù ha pennadour rimet war *siou fall ar
Vretoned*, pennadour fentus war an dro ha leun a
skouer;

gant eur marvailh skrivet gant eur Breton eus
Paris war vue Bretoned Paris;

gant eur pezh fentus, *Kolas hag e verzereuti*.

N'eo ket ar c'houiz eta da zilezel Kroaz ar Vre-
toned, mes da dostal outi mui-ouz-mui!

BREURIEZ AR BREZONEK

Gouel Kervaria-Sulard

Gouelioù Breuriez ar Brezonek a zo gret,
dreist-holl, evit ar vugale. Pa ouzont leun 'vel zo
dleet, pa deont goude da 'n em stagan ouz Breu-
riez ar Brezonek ha Kroaz ar Vretoned, ar
gouel a ve bet mat, eus ar gwellan.

Evelse ni hall lavaret hirris hag a hallo hen
adlavaret gwelloc'h c'hoaz 'benn nebeut, a gredan,
penoù gouel Kervaria a zo bet dreist ar re-all.

Gwir eo, ne oa ket a dud evel m'ho devoa
gwelet en Plouagor, en Prat, en Peurit, en Keriti;
n'eus ket bet kalz a werz d'ar zontioù, d'ar bilhejou
c'hoari-zac'h, en askont e oa nebeut a dud, (eun
nao-ugent bennak). N'eus forz; ar pezh a glas-
komp, da gentan, n'eo ket tud eleiz da zoni da
brenan bilhejou evit ma hallfemp ober eur gwen-
neg bennak da zikour paeon hon dispignou; n'eo
ket, zoken, bodan tud eleiz da glevet prezegennou
Ar Yeodet, daoust pegen n'eus ha pegen birvidik
int; ar pezh a glaskemp da gentan, en eur groni
Breuriez ar Brezonek, eo dastum ar vugale da
zeski leun ar Brezonek, da zeski karout o Bro
Breiz-Izel, he Fe, he Gizion, da zeski bean, dre
forz leun ha studian ar pezh a lakjemp etre o
daouarn, Bretoned trec'h d'ar re 'zo bet 'boue pell
'zo, hag o deus bet lezet, siouaz, krignat o Bre-
zonek ha labean an hano kaer a Vreton.

Ar gouel a eo gret, wardro ter eur, en ti al
Leanezed. Trugare d'ê ha bennoz Doue da vean
digoret o zi ken frank da Vreuriez ar Brezonek
ha d'he renerien Ar Yeodet ha Dir-Na-Dor.

Epad ma zo unan ane o renkan ar prijou hag o
skrivan an hanoioù, egile, Ar Yeodet, a grog
gant e brezegeu. Pebez neiz ha pebez kalon en e
gomzou! Nag a wirioneou distaget mat a glevas
eno tudo Loc-Maria! Kaerat skouer a weljont ive
dirak o daoulagad, eun den yaouank o tisklerian,
hep aon, penoù e vo bepred, en despet d'al « lam-
poned », servijer ar Wirione, da laret eo, servijer
Doue hag ar Vro!

Goude ar brezegeu eo lodennet ar prijou. Ar
vugale a deu, d'o zro, da gemer al levrioù
prenet evite. *Buez ar Zent, Ma beaj Jeruzalem,
An Testament koz ha neve, Buez hon Zalver
Jesus-Krist*, ha skeudennou kaer a bep seurt.

Breuriez ar Brezonek na zell nemet ouz eun
dra: ma vo an holl vugale dic'haonet diuz o labour
ha ma'n evo pep-hini eun draig bennak; kouls-
koude, tri pe bevar n'o deus ket bet ar pezh o devoa
goneet: Denise Le Roux, Maria-Yvonne Balcon,
Eugène Damany, hag Anna Pelibou, Houman,

Eur Gazeten neve

Ar « Pays breton »

An 18 a viz genver e c'hano eur gazeten neve,
savet evit mad ar Vro, gant hon mignoned ha
kenvreudeur, an otrone Mellac ha Loeiz Herrieu.

Ar gazeten-ze hanvet ar « Pays Breton » a vo
skrivet en galleg hag en brezonek. *Pevarzek real*
ar bla e kousto. Hon lennerien a reio mat kemer
aneiz; bean vo, gant *Feiz ha Breiz*, ar Vro,
Dihunamb ha *Kroaz ar Vretoned*, 'vel ar
bempved korden eus an delen a zou dre bevar
c'horn ar Vro da zihuni ar Vretoned o deus an-
kouaet p'ion int ha da betra int galvet.

Kas an hanoioù da gentan, hep an arc'hant, da
*Vureo ar « Pays breton », 91, rue Carnot,
Lorient.*

BREURIEZ AR BREZONEK

Eur Vreuriezh evit bugale Breiz

Adalek ar bla neve, *Breuriez ar Brezonek*,
laket dindan skoazel ar Mabig Jezuz, ar Werc'hez
ha sant Ervoan a zo krouet da vat en hon Bro evit
ar Vugale, aboue an oad a 9 bla betek an oad a
14 vla.

Petra da rei? — Nebeut a dra!

An holl vugale hag a zo en oajou-ze eo digor
d'ar Vreuriezh, gant ma paeoint bep bla 8 real
d'ar Vreuriezh, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Petra da c'hounit? — Kalz a dreo ha kalz a vad

'Vit an 8 real-ze, ar bugel an evo,

DA GENTAN:

Kroaz ar Vretoned 'pad ar bla, kaset dre ar
post; da laret eo, *Kroaz ar Vretoned* vo roet
d'ar vugale 'vit hanter-briz, rak 16 real ar bla e
ve paeet.

D'AN EIL:

Ar vugale o devo 'vit man eur c'haier laket
warnan siel *Breuriez ar Brezonek* hag o hano.

D'AN DREDE:

Bean 'devo, da skrivan war o c'haier ha da zeski
dre 'n euvor, *pennadour labour* a gavfoint eur
wech ar miz en o c'hazeten.

D'AR BEVARE:

Bean 'devo, eur wech ar bla, *prijou* herve al
labour o devo gret war o c'haier hag ar gouid o
devo gret war an deskamant brezonek.

D'AR BEMPVED:

Bean o devo lod, an eil war-lerc'h egile, en
kement tombola pe c'hoari-zac'h a rey *Breuriez
ar Brezonek* er parouzioù 'lec'h ma roo gouelioù.
Ar pezh a c'hounefont gant ar bilked kemeret evite
a vo kaset d'ê.

D'AR C'HOUECHVED:

Ar Vreuriezh, o vean dindan skoazel ar Mabig
Jezuz, ar Werc'hez Vari ha sant Ervoan, e vo
lavaret ter oferen ar bla, unan da Nedeleg, eun
all da viz mae, 'mare gouel sant Ervoan, hag eun
all da viz est, e kerz gouel ar Werc'hez, evit holl

BRIZ-BREZONEG

Eul lennerez a gas d'imp eun nebeut brezoneg fall da gempen. Trugare d'ei; eun almanag *Kevedigez Breiz* a vo kaset d'ei.

Setu aman, eme hon lennerez, eun nebeut lavarior-fall a glevan alies:

- Hennez ne oar ket an *nomb* eus e zanvez.
- Malheur* en deus gant e loened.
- N'am eus *konsolation* ebet gantan.
- E zillbad n'int ket *propr*.
- Du-man 'z eus tri *machin* da c'hriat.
- Gret am eus teir *gabinet* em zi nevez.
- Kavet am eus eur *plac acomod*.
- An *habitud* em eus da ober kement-se.
- Me o *supli* da zont d'am gwelet.
- Obligation* vat em eus d'eoec'h.
- Deut oun da *remersia* ac'hanoc'h.
- Ne oar ket *parlant* c'hoaz.
- Eur *gombat* rust a zo bet ganto.
- Dies eo gouzout e *santimant*.
- Desir* em eus d'e welet.
- Me zo *kountant* da bartaji ganez.
- Setu aze eun aflu *important*.
- An dra-ze en deus gret *impression* warnon.
- Eun *accident* trist a zo c'hoarvezet gantan.
- Diminui* ra va arc'hant ganin.
- En em *soumeti* a rankan.
- Mont a ran da *gonsulti* unan bennak.
- Calmet* eo e derstien.
- Houneuz 'zo karget a *vanite*.
- Dioec'h ar c'henta *kalite*.

Pedi 'reomp breman-hon lennerien da gas d'imp kement-man laket en brezoneg mat.

Ar re o devo gret ar gwellañ kavadennoù 'vo laket o hano warlerc'h ar pez o devo kavet.

Otro Rener,

O klevet an dud o kozeal em eus evesaet ouz o c'homjou, ha poanüs bras eo gwelet penös eo kemmesket ar brezoneg hag ar galleg er vro. Mantusad stad, pa gomprenan e teu lavariorou evellen eus genou tud savet mat ha zoken er c'hargou uhellan er vro.

- (1) Diwallit da ober eur *c'hrim* ken *execrabil*.
 - (2) Tolet ar c'hig er *pofer*.
 - (3) Evel-se e vo kont, *certenamant*.
 - (4) Ne droc'h ket an *häch*.
 - (5) An den-ze 'zo *incurabil*.
 - (6) E c'har deo a zo *paralisset*.
 - (7) Petra a refet-hu gant an den *estropiet-se*?
 - (8) An dra-ze 'zo skler. Pep hini e vicher.
 - (9) Na *frekant* ket an den-ze pe e tapi da fall dioutan.
 - (10) *Trotal* mat a ra ho marc'h?
 - (11) Pelec'h e redet evel *ze*? *Directamant* d'ar ger.
 - (12) Ar vaouez a zo du-hont he deus panset mat d'ün ma gouli.
 - (13) Ar *becassined* a zo start da dapont.
 - (14) An doctor na ve *visibl* nemet eus eiz eur da greiste.
 - (15) Hennez eo *statu* sant Brieg.
 - (16) Me am eus bet eun *education* vat digant ma mestrou.
 - (17) Kalz a dud a gomz diouti gant *mépris*.
 - (18) Setu aze eun den *blamabl* meurbet.
 - (19) Herve an *aprans*, henez 'zo eun denig jentil.
 - (20) Bet ec'h on adarre *viktin* eus eun *accident fachus*.
 - (21) N eur gomz evel-se e plant d'in, hep hen gouzout, marvat, ac *poignard* dounoc'h-dou 'n eun c'halon.
 - (22) Da bed heur e oa *sortiet Jean*?
 - (23) Blavez mad a *souhetan* d'ec'h.
- Setu aze eun toullat briz-lavariou, fall a gredan, dastumet diwar nij.

Pelli a ran Ar Yeodet, A. Böcher, da digemer ar gwellañ menozioù a vlavez mat eus peurz e Filhor. Rak bean 'meus an honor da dougen e hano, ha zoken e hano badeziant.

Blavez mat eus a greiz ma c'halon ive da *Groaz*

ar *Vretoned*. 'Ra deuo da diswrienni an holl briz-lavariou a ren ken stank en hon bro Vreiz.

Kenavo!

August BOCHER,

Kelennek, Loguivy-Plougras.

- Setu aman ar frazennoù divanket:
- (1) (Diwallet da ober eun torfed ken heuzus).
- (2) (Tolet ar c'hig er pouthouarn).
- (3) (Evel-se e vo kont, m'oar vad pe a dra zur).
- (4) (Ne droc'h ket ar vouc'hal).
- (5) (An den-ze n'eus ket a bare svitan).
- (6) (E c'har deo a zo seizet).
- (7) (Petra a refet-hu gant an den mac'haniet-ze).
- (8) (Ar frazen 'zo reiz; *skler* a zo eur ger brezonek; e lec'h *skler* e c'heller lavaret *splan* pe *anat*).
- (9) (Ne zarempred ket an den-ze pe ne hent ket pe ne bleustr ket).
- (10) (Ar frazen 'zo reiz).
- (11) (War-eun d'ar ger).
- (12) (Pe prederiet, pe *özet*, pe louzaonet).
- (13) (*gioc'h* eo hano al lapouz-ze a brezoneg reiz; *gioc'hed* evit meur a hini. Anavezet mat eo ar *gioc'hed* e Treger-Izel).
- (14) (An doktor-ze n'heller ket e welet nemet).
- (15) (Houneuz eo skenden sant Brieg. Ar ger gwellañ evit « statue » eo *delven*, a leunau war *Dihunamb*, kelouen mat hon mignon Loeiz Herrien).
- (16) (Me am eus bet eur geleunadurez vat).
- (17) (Kals a dud a gomz anez i gant dispriz, gant disprizant).
- (18) (Setu aze eun den da *damall*).
- (19) (Evit doare, henez a zo eun denig jentil).
- (20) (Eur *gwall-darvoud* pe eur *gwall-lamm* a zo digouezet ganin adarre).
- (21) (E plant d'in ar gontel pe ar c'hleze... E Leon e ve lavaret neuze *sanka* e lec'h *planta*).
- (22) (Gwir hano *Jean* eo *Yan* e brezoneg reiz; *mont hvit*, *mont er-maez* a zo reisoc'h brezoneg eget sortial).
- (23) (Bloavez mat a hetan pe a reketan d'ec'h).

PEVARE LIZER EUS NAONED

Eul levr bras a vije red, ma karfen displega d'ac'h kement ha kurius ha kaer a zo en iliz-veur Naoned. Koulskoude n'hellan ket chom hep komz d'ac'h eus be Francez II, an diwean duk a Vreiz, tad an dukeaz Anna, — Anna Vreiz, evel ma laromp c'hoaz, ni, Bretoned. Trist a-walc'h e oa e bladenen; trec'het gant roue Frans en emgann reuzeudik Sant Alban (Saint-Aubin-da-Cormier), e varvas en dizesper o welet e vro izelaet, hag e verc'h vihan o chom, yaouankik c'hoaz, e kreiz ar brasan trubuilhou. Hogen, Anna a oa eur Vretonez. Ne gollas ket kalon, ha ma eo trec'het, hi ive, gant ar C'hallaoued, e viras an enor, dre hec'h ijin hag he spered lemm; miret a reas ive d'he bro he frankiz hag he gwirioù.

Araok dimezi da Roue Bro-C'hall, 'oe red d'ean toui e vije miret gwirioù ar Vretoned ha miret ive o yez hag o lezennoù. Truaj ebet na vije laket warne hep bean bet votet gante araok, en breñjou bras ar vro. Evit ar feiz gristen, daoust da roue Frans da vean ken kristen mat hag Anna, laret e oa koulskoude e vije bepred dibabet an eskibien etouez ar veleien ginidik eus Breiz.

Pebez kemm, ma Doue, stre an amzer-ze hag hon hini! Mes et on gwellañ eus be Francez II.

A-boan adkavet ganti eun c'ammik peoc'h, Anna a laras oa red sevel d'he zad eur be din eus eun duk a Vreiz. Gervel a reas eur c'hizeller dispar hanvet Michel Coulomb, eur Breton, hen ive, ganet en Kastel-Paol, ha netra na oe espernet evit ober eul labour a bouez.

War ar men-be eman gourveet skeden an duk hag hini e wreg, evel o kousket didrous.

En harz o zreid, al levr, arouez ar Vretoned, tud feal, 'zo evel oc'h ober gward warne.

Tri elig 'zo ouz o fenn, evel da evesaat oute, ken na vo deut an eur da dihuni o c'horfou, da de diwean ar bed, evit mont da c'hoar ar baradoz gant o eneo evurus. Ep pevar c'horn ar be, 'man peder skeden ar vertuzioù bras a zo red d'an den evit ren eur vuez gristen: Prudans, Nerz, Justiz, Temperans.

Unan ane e kreder eo poltred Anna a Vreiz. Ar be-ze, kaer meurbed, na oe ket savet gant an dukeaz Anna en iliz Sant Per.

Iliz ar Garmez a oa eun iliz devot meurbed hag e kare kalz pedi emei. Eno e sonje he dije kousket, hi ive, tost d'he zad, o c'hortoz o-daou en peoc'h, lusket gant pedennou ar veleien vreton, barne-digez an Aotro Doue, Anna, evel rouanez Frans, a oe sebellet en Sant-Denis; ar memes planeden evel hini he zad a oa o c'hortoz anei. En amze-riou reuzeudik an Dispac'h Vras, be an tad, koulz ha hini ar verc'h, a oe torret, hag o relegou sllapet ermez, e-kreiz ar blasfemou hag ar c'houn-zou hudur. Mez war eur hobl ha n'an eus ket a zoujans 'vit ar re varo! Ar vibien, siouaz, n'int ket gwelloc'h evit o zadou: ma ne dorret ket c'hoaz ar bezion, laerez a rer an anaon.

Be Francez II a oe kuzet gant eur c'hristen mat dindan peziou mein ha penkon en iliz diskaret. Deut adarre ar peoc'h ha digoret an ilizoù, e oe adkavet 'barz an iliz diskaret ha savet adarre en iliz-veur Sant Per. Dindan ar memez be, e oe laket ive an duk Arzur III, ar brezellour bras, an den dispar a zovetaas Frans a-uan gant Janed Ark.

Da blijo gant an Aotro Doue e kouskfent be-pied en iliz Doue, e-kreiz ar veleien santel o pedi evit o eneoù. Plou a oar, siouaz, hag-en ne deuo ket c'hoaz ar Franmasoued da derri peoc'h o hun diwezan!

N'eus den tremen dre Naoned ha n'afe ket da welet be duked Breiz. Souezet bras e chom an holl o welet pegent kaer eo kizellet. Red eo d'an dud gwiziek an war vicher ar c'hizelladur anzav eo lieman eur pezh labour evel ne gaver ket meur a hini, zoken 'barz ar broioù brudet an evit o zreo gaer, evel an Itali hag ar Spagn.

En iliz Sant Per zo c'hoaz eur be-all kaer meur bed, savet d'ar jeneral brudet Lamoricière, eun den kristen ha kalonek a zifennas ar Pab epad ar c'hautved diwezan.

Evit sevel ar bez-ze, katoliked Naoned a c'halvas unan eus ar hizellerien brudet an Paris, hag, evit sur, kaer meurbed eo ive e labour. Ha koulskoude, pa c'h a d'hen gwelet an dud desket mat war an ijinou kaer, goude bean sellet ouz hini ar c'hizeller breton, ec'h hejont o fenn 'n eur laret: « Petra eo heman, laket e keuver labour dispar Mikel Coulomb? »

En gwirione, entant e galon gant eur garante donjus evit e vestr karet, an duk a Vreiz, leun a garante-vro evit e Vreiz, ar paour keiz kizeller breton an eus gret eun dra burzudus. Trec'h eo d'ar c'hizeller parizian. Muioc'h a vuez 'zo barz ar skeudennou bras, muioc'h a vavente 'barz ar skeudennigoù ele a zo o harpan pennoù an duk hag e wreg.

An daou elig-ze eo ken dudius o dremm, ma seblantont, e gwirione, gwir gannad ar Baradoz.

Pep tra a zo dereat, hag an diou skuden gour-veet war ar be, peoc'h an nenvou war o dremmoù gwan, a ziskouel ervat petra eo maro ar Gristenien, eun hun dous ha ditrous da c'hortoz dihun bras an de diwezan, pa vo galvet ar c'horf da danva gloar an ene, nijet dija da Varadoz Doue.

GWELTAS.

YEZ AR C'HELTED

Yez a gane gwechall en goneled al lannou, Pe dirak ar mor don Osian ha Marcia! Yez a gan hirio c'hoaz, evurus ha lirzin, Gwynn Ioan ha Taldir en o c'hanoaouennou.

Setu 'n eus c'hoantar Gall d'az mouga en hon Breiz! Hogen, ar paour keiz sod, kaer 'neus beza nerzuz, Ne deuj ket a-benn eus o doufed euzuz: Kalonou dir ha ter a lamm ato 'n hon c'hreiz!!!

Ha n'eo ket evit man! Prest omp hiviziken Da skuilh hon gwad betek an diveza taken Evidout, mar deo red, o yez koz, o yez kaer!

Gellout 'rez 'ta beza dinec'h ha dianked, Rak, en despet da yeo miliget ar gwasker, Enoret en hon touez, te 'vevo da viken!!!

MATHALIZ.

BLAVEZ MAT AR MESTR-SKOL

— Bugale, eme ar mestr-skol, c'honi 'ya breman d'ober pep a lizer blavez mat da gas d'ho kerent; pep hini a lako peza d'roo 'n e benn.

Setu Perig o kemer e bluen hag o skrivan en galleg war e gater :

Mes chers parents,

Je vous souhaite une bonne année, une bonne santé et le paradis à la fin de vos jours.

O tout ar mestr-skol da welet kafer Perig :

— Petra teus laket aze, emean, innosant? Krenn ar pennad diwean, ha hast buhan!

Hag e kemeras ar mestr-skol ar bluen hag e raskas ar giriou : et le paradis à la fin de vos jours, hag ar baradoz e fin ho puez.

(Kontet gant Perig.)

AL LEON HAG E VEDESINED

Al Leon a zo klauv, al Leon na debr ket ; Diskaret gant ar boan nan e ken 'vit kerzet ; Aboue tri de eman gourveet 'n e balez, Hag an dristidigez a zo bras en e lez. E sujidi a deu a bell-bro, a vagad, Da c'houl eus e gelo, mes den nan hall tostet Da wele ar c'hlanvour, rak e vedesined A zo endro d'ean tri de zo dastumet.

Troet 've, distroct, tastonet a bep tu, Unan a lavar gwen, eun all a lavar du ; Hen a glemm, a hirvoud ; i, prest d'an em dagan, N'int ket 'vit 'n em glevet da louzaoui 'nean. An Ourz a lar dichak, c'houeet 'vel eun doktor : « Hon Roue, emean, m'hen tou war ma enor, 'N eus lonket eun askorn, an de-all, 'n eur dibri ; Ma benviou raktal, me ya d'hen digeri ! » Ar Marmouz, o klevel, a ziriol da c'hoarzin ; Gant forz ardo e lar : « O otro medesin, Louzaouer, diwader, c'honi a fazi, me 'gred ! Keun bras 'n eus, a dra zar, o tont d'ho tislaret ; Mes hou Mestr n'e ket klauv ; eun tam poan-benn, [m'oarvad,

A zo endro d'ean ; pareet 'vo timad, Gant eur pladad kik fresk hag eur c'hofad gwinn koz. » — « Dampret ! mat sur, marmouz, mat sur ec'h e [da gaobz,

'Me Alan, goapaüs ; mes taol ple mat, d'as tro, Ec'h e 'n e izili eo delec'het hon Otro ; Gwriet int gant ar boan, nan eo ken 'vit kerzet ; Me 'zo zur e vo yac'h 'dal ma vo bet tanet. » — « Allas ! eme ar Bleiz, mar n'e ket eun drue, Gwelet eman ar garg a yec'hed hon Roue. Tre daouarn babouzien ar sort gant ar re-man ; Bec'h a zo kas gouzout piou o vo ar zotan ! Penôs ? ne welet ket en eus an derzien dom, Hag e fell e wadan 'vit e lakat 'n e blom ? »

Louzaoui ar c'hlanvour er c'hiz a gavont mat, A vank d'an holl, 'vel just ; unan a grog 'n e droad, Eun all a grog 'n e benn hag eun all en e lost, Pep-hini 'jach d'e du zodel-tre, pe damdost. Padet an ije pell gante an abaden, Mar ne vije ket bet en eun taol troc'het krenn Gant o Mestr peurlazet a dec'has d'ar bed-all.

Hon bro a zo breman etre daouarn tud dall, Pabored divergont a dremen o amzer 'Bars en kojo c'houeet hag en diskourio kaer ; Da heul 'reont, siouaz ! eul labour didalve ; Eun taol skubelen 'vank pe hon c'hasfont d'ar be.

LAOUIK.

Eul lizer mad eus an Amerik

New-York, 10 a viz Kerdu 1907.

Va Mignon,

Setu me digouezet en Amerika breman, er Bed-nevez evel ma 'z eo galvet en Europa. Ya, sur, nevez eo e pep tra ! Ha c'hoant bras o deus, a gav d'in, da dizout an neuv, o veza ma 'z eo ken uhel o ziez. Ama e c'helfe eun den speredek studia holl yezou an douar, nemet yez ar vorianed o deus ankounac'heat o hini evit deski ar saozneg, lavar o mestr gwechall, en amzer ma oant sklaved.

Hogen an nevesa tra am eus kavet mar va hent ama, eo ar frankiz a gomzer kement anezi en Bro-C'hall ha d'ezo heb anaout tam ebed anezi. Ama ne weler ket eur mec'hiog bennak o spia hema pe hennez hag o redek dioustu da ziskuilha ar peza ra, ar peza a rafte, pe ar peza an deus marteze c'hoant da ober. Tra vezus ! ha na hell ket kredi e ve tud ar vro-man possubl. Ar c'hatoliked a zo niverus ama hag o deus skoliou bras, ilizou kaer. Bez' ez eus kant hanter-kant iliz en kear vras New-York. Holl katoliked ar Stadou-Unaned dre ar vro a-bez a zo en o saou ha dourn-ouz-dourn evit difen, harpa o feiz, o skoliou, o giziou mad hag ar frankiz dleel d'ezo. Allaz, pa vezo Breiz-Izel frank ha digabestr, an holl Vretoned a gerzo ivez dourn-ouz-dourn, kalon-ouz-kalon, unanet en dion garantez a rea tridal hon zadou koz : karantez Doue ha karantez ar Vro. Neuze e c'hellin c'hoaz gwelet va bro gaer Breiz-Izel !

O Breiz-Izel, kaera bro dindan an heol, gant da yez koz, da dud laouen bepred o kana, da dourioù uhel, ar c'hleier o sini enno, gant da oabl koumoulus ha da aochou kizellet gant ar mor, te a choumo skrivet da hano em c'halon ha n'eus forz pelec'h ez in n'az ankounac'hañ biken. Sonj am bo atao er re a labour eviti, ha c'houi dieist-oll, va mignon kaer. Eur bloavez mad a hetan d'ec'h ha da Groaz ar Vretoned. A bell e kasañ d'ec'h va hetou, hogen me a esper e vezint selaouet gant an Aotrou Doue.

BREUR CRISPIN-MARIUS
(Ar Gwenedour).

KAN BREZEL

War don ar c'hanig : Pec'het em eus.

D'ar Yevdet-Bächer.

Labourerien ha tud disket,
A-walc'h 'velse hon deus kousket ;
Hon gouen dinam a zo gwasket !

DISKAN

War zao, Breiziz kreno ha feal,
Ti hou, hou, hou, hou !
Mar fell d'imp beva dishual ;
Ti hou, hou, hou, hou !

Pell eus hon c'hreiz ar velkoni !
Deut eo an eur evidomp-ni,
Deut eo an eur da zihuni !

Noz deiz, siouaz, hon Mammig-Bro,
War he dismantrou 'skuilh daero,
Eun eur c'hortoz eur ar maro !

Trist eo hon stad ! N'eus forz, Bro-C'hall
Na ehan ket d'hon disfiel,
Ha d'hon moustra, gwasa ma c'hall !

Ar Brezoneg, hon paour kez yez,
A zo argaset hep paouez,
Gant he skolaerien didruez !

Pez a garomp 'deus kailharet,
Hag hon frankizioù ken karet,
A zo bet ganti douaret !

Kasoni 'deus ouz hon gizioù ;
Ha daoust da gounnar hon mouezioù
E kresk c'hoaz he c'hoantegezioù :

Poent bras eo d'imp sevel hon fenn,
Ha 'n em voda evit difenn
Herez hon Tadou ! Torr e benn !

MATHALIZ.

KELEIER EUS AR BEG-OLL

Ar ministr neve. — Eun tam chanchamant 'zo bet etouez ar ministred gant maro an otro Guyot-Dessaigne, ministr ar Justis.

Ar ministr Briand, an hini an eus gret votan lezen an Disparti, a zo laket da vistr ar Justis, hag a dap evelse daou blas.

Ministr ar C'honvers, an otro Doumergue, a zo hanvet ministr ar Skoliou.

An otro Cruppi, depute eus ar C'hreizte, a zo hanvet ministr ar C'honvers.

Ha breman, ma karet goût ped ministr a zo bet e Fraus aboue ar bla 1870, bet 'zo 231, ha kalz na gonter nemet eur wech hag a zo bet ouспен eur wech.

An otro Briand eo an d'ried ha tregont ministr ar Justis aboue pemp bla ha tregont, hag an hini diwean eo ar fallan, rak Briand, 'vel ouzo'h, a zo bet « anarchist », (hag a zo c'hoaz !) da laret eo, enebour touet pep lezen, pep urz, pep reolen, hag an otro-ze 'zo breman... ministr ar Justis !!!... En amzer vremen eo Judas 'zo o ren.

Amerikaned ha Japaniz. — An Amerik hag ar Japan 'zo o klask stagan. Kement-se, diwarben ar vicherourien japan a deu da labourat d'an Amerik hag a dag ar vicherourien-all, dre ma labouront kalz izeloc'h priz.

Ar Japan, eus an tu-all, eo red d'ean klask toull da 'n em denn, rak e dud a zo ken niverus ken n'hallont ken bevan en o bro, hag ec'h eont evelse, a vandennou, da glask bara ha lojeiz da di o amezeien, an Amerikaned.

Pa n'houl ket an Amerikaned dioute, 'vo red eun tol strap bennak da c'hont piou a blego.

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

PONDIVI. — Ar person chaset. — Otro person Pondivi a zo bet chaset, ar zun-all, eus e brespitoar gant zoudarded war droad lia war vare'h, gant archerien ha... kantonierien.

Kantonierien o deus torret an dorojou war an ti.

Ar franmasoned na voint laouen nemet an de o devo skazet, hini ha hini, ar presbitoariou, zerret an ilizou ha harluet an diwean beleg.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

KERITI. — Jeanne Weber. — Jeanne Weber, ar Vretonez, plac'h bugale, hag he deus laket komz anezi kement aboue daou pe dri bla so, a zo o paouez bean losket ermeaz eus ar prizon dre he gaved netra da damall d'ei.

Tristat bue he deus bet ar plac'h-man ! Gant e Keriti, ec'h eas da Paris, d'an oad a beuzek vla, warlerc'h Parizianed bet o tremen an hanv e Pempoul. Adalek neuze, n'he deus bet nemet gwall-er. Dimezi a reas d'an oad a naontek vla ; ti vugel he devoa hag a varvas o zii. O vean zoueet klauv, kerent he fried a deus d'he gwelet, ha pa oe pare, e talc'has da henti ane. E-keit ma oa gante, pevar eus he nizien bihan a varvas etre he daouarn.

Setu tamallet Jeanne Weber da vean mouget ane. Red oe d'ei kwital he deu, ha kement a drubuilh he devoa gant he zud o poursu anei, ken e klaskas 'n em veuzi.

Sovetaet e oa ha kaset d'an hospital. Eun den a ziavez Paris a skrivas d'ei neuze dont d'e di. Nebent amzer goude, unan eus e vugale a varvas.

Zerret e oe adarre Jeanne Weber er prizon ha kaset dirak ar varnerien.

Setu eman o paouez bean loskaet. Eur barnet eus Paris an eus kemeret anei da vatez.

Daoust hag achu eo gwall-reuz Jeanne Weber ? Da c'hortoz gwelet, eun dra a hallomp da zisklerian. Ma vije chomet en he bro, he bue na vije ket bet ken glac'harus, ken mantrus.

PLEUDEL. — Torret e c'harr. — Allain-guillaume, labourer en Pleudel, k oa o tont d'ar ger, pa dec'has eur men a-zindan e droad. Ar paour kez den a goueas ha torri e c'harr.

SANT-KLEVE. — Parouz hep beleg. — Otro person Sant-Kleve, an otro Paturel, chaset gant ar m'her emeo 'zo tri miz pe wadro, a skriv eul lizer d'an otro 'n Eskop d'e hedi da hanvan en Sant-Kleve eur person-all 'n e lec'h.

Al lizer-ze a ra kalz a enor d'an otro Paturel.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

dreist-holl, a vo digollet mat, rak eur renk izel a oa roet d'ei, dre fazi, hag-en he devoa goneet an trede priz.

Benn ar c'hoari-sac'h kalz a dud a oa et d'ar ger, rak peder eur hanter e oa hag an noz a deu breman prim.

Keun o devo bet ar re na oant chomet betek ar fin, daoust ma oe red ksout golo d'achui. Eunn hanter-kant a lodennoù, kernioù butun, butun, kratatennou, spilhoù alchouebet eus ar braoan, gwestel, hag eleiz a dreo-all a oa da c'hounit, hag ar re o goneas a reas d'è digemer mat.

Ken berr, avad, ec'h aruas an amzer ken n'hallas hini ebet eus renerien *Breueriez ar Brezoneg* trugarekat zoken tud Kervaria, ha, dreist-holl, tadou ha mammou ar vugale, eus o bolante vat.

Ar pezh na oe ket gret disul a zo mat d'ober breman. Bennoz Doue eta war barouz Kervaria war he ferson, a diskoueas d'imp kement a vadelez ma n'hallfomp biken hen ankouat; war ar vugale ha war o zud, hag e oe kanet evite eunn oferen, dilun ar beure, unan eus an ter oferen ar bla a lako *Breueriez ar Brezoneg* 'vit he bugale.

Setu aman breman roll ar prijou :

Deut oa *seitek* pôt'r ha *c'houec'h warn-ugent* plac'h. En parouz ebet, *Breueriez ar Brezoneg* n'he devoa c'hoaz daslamet kement na ken mat lennerien brezoneg. War an tri ha daou-ugent bugel-ze, bean zo :

seitek hag a leun mat sur ar Brezoneg ;

eiz hag e leun brao gante ;

unnek hag a leun mat ;

ha seis hepken hag o deus ezom c'hoaz eus eunn tam studi.

Setu aman an hanoioù dre renk, gant an notennoù evit ar re gentan.

Pôtred.

Kentan priz : Y.-M. Le Corre, 19.
Urbain Fortun, 19.

Eil priz : P.-M. Le Bail, 18.
Emile Kernanet, 18.
Louis Derrien, 18.

Trede priz : J. Lucas, 17.
Y.-M. Lucas, 17.

Kentan accessit : Vêrel, Joseph.

Eil — : J.-M. Fortun.

Trede — : Damany, Eugène.
Henri Lohou.

Pevara — : Pierre Calvez.

Emile Glas.

Pempved — : François Le Borgne.

C'houec'hved — : Y.-M. Montréer.

Seizved — : Y.-M. Philippe.

Eizved — : F. Kerandec'h.

Merc'hed.

Kentan priz : Marie-Yvonne Henry, 19.
Marie Petibon, 19.

Eil priz : Valérie Merrer, 18.
Anne-Marie Labbat, 18.
Denise Le Roux, 18.

Trede priz : Véronique Calvez, 17.

Anna Petibon, 17.

Pevara priz : Marie-Angèle Lohou, 16.

Marie Rolland, 16.

Pempved priz : Berthe Guicé, 15.

Kentan accessit : Aline Buzulier.

Anne-Marie Gwellaën.

Ambrosine Coadou.

Eil — : Marie-Yvonne Balcou.

Trede — : Rosalie Morvan.

Pevara — : Joséphine Poullen.

Pempved — : Augustine Guillou.

Mahlilde Cabec.

Seizved — : Célestine Le Borgne.

Merc'hed bihan

8, 9 bla.

Kentan priz : Anne-Marie Le Corre, 18.

Eil priz : Léontine Merrer, 17.

Kentan accessit : Benadette Montréer.

Anne-Marie Rolland.

Eil — : Germaine Bourdellès.

Marie Gwellaën.

Trede — : Joséphine Calvez.

Etouez an holl vugale-man, n'eus hini eta ha n'hall ket rei e hano hag e *eiz real* ar bla da *Vreueriez ar Brezoneg*, evit kaout *Kroaz ar Vretoned*, an hini vras, epad ar bla, kaout lod er prijou a vo roet bep bla, kaout lod en ter oferen a vo lavaret ive bep bla evit bugale ar *Vreueriez* hag o c'herent beo ha maro.

Nan, n'eus hini ebet ha n'hallfe rei d'imp e hano, rak an nep an eus ezom a studi a studio 'n eul lenn bep sun ar gazeten, hag an hini a oar lenn a lako e zeskamant da dalvezout evit e blijadur e-unan ha plijadur ar re-all.

Evel 'zo skrivet uhelo'c'h, *Breueriez ar Brezoneg*

a zo zavet da vean :

skoazel ar c'herent,

skoazel ar beleg,

skoazel ar mestr-skol krister, evit sevel ervat bugale Breiz-Izel. Mes ézet eo goñt n'hallo rei sikour nemet d'ar re a deuo daveti.

'N em glevet hon deus gant an O. Raoul, person mat Kermaria-Sulard, evit ma kemero, da gas d'imp, arc'hant ha hanoioù ar vugale a zo bet o leun disul.

Deunt holl, ha ni hou devo adarre kalon da gerzet war rôk, hag int o-unan, ma tenout dave-domp ha ma sentout ouz hon aliou, a zanto mui-ouez-mui o c'halonou o tomm evit Breiz-Izel ha pep mad.

DIR-NA-DOR

KONTADEN AR ROUANE

D'am merc'h bihan Paola.

E-kreiz ar menseioù da, en eul lochig golpet gant brug ha savet e-kreiz al lanneier pell eus pep kerig tro-war-dro, e chome, gwechall-goz, eunn intanvez arrou war an oad, hag a veve eno hep bugel ebet d'he sikour, hep danve na micher.

Evit gwir, ne oa ket brudet re val er barouz, rak, mar d'aremprede ar pardonioù hag an eurenjou, ne oa ket evit pedi an Aotrou Doue ha goulenn e c'hrason, mes kentoc'h evit kaout lod er « friko » hag eva bannac'higou da yec'hed ar prijou neve. C'houez vat ar gensteuren a blije d'ei muioc'h evit c'houez vat an ezans. Ouspenn ze, bean devoa war he c'houstians kalz a droioù kam. Meur a zousen uou, meur a gilheg lart ha mat da werza, klasket en aber gant ar maouezed beurevez ar marc'had, na oant ket bet delret gant Alanig, nemet gant eul louarn pe eul louarnez daou-droadek a chome e-kreiz al lan en eunn toull henvel a-walc'h ouz hini he breur pevar droadek ha ken lous hag hen.

Ha koulskoude, da Nedeleg, ar bla 18...

Marianna, wardro unnek eur, a glozas he lochennig gant eunn tam koat, rag toull alc'hous ebet na oa gwelet en nor, o vean ne oa ket, marvad, kalz a arc'hant da guza ouz al laer. Setu li warzu ar bourk a-dreuz d'al lanneier. Kaer ha rividik e oa an noz; al loar leun a zave splann en oabl e-kreiz ar stered, mes Mariannig ne oa ket he fenn gant al loar hag ar stered. Ma kerze an nozvez-ze war-zu ar bourk ne oa ket hepken evit mont d'an oferen hanter-noz, mes, kentoc'h, evit mont da hostaliri ar Marc'h-Gwenn elec'h vije, dioc'h he devoa klevet, eur jolori eus ar c'hentan : kig rostet, kafe, gwinn-ardant, dansou hag ebatou evit ar re yaouank.

Evit sur, mont a raje d'an oferen, er c'horn pellau, tost d'an nor. Red eo ober evel ar re-all; en eur barouz kristen, tremen hep mont d'an oferen de ouel Nedeleg a vije lakaat an teodou da vont eudro. Ped Breton, siouaz, a zo breman oc'h ober evel Marianna!...

En eur zonzal en treo mat a oa o c'hortoz anei er Marc'h-Gwenn, Marianna a gerze bubann ma c'halle... Al lanneier a oa sioul... Netra, na den, na loen nemet ar brug hag al lann, en o c'hreiz peziou mein plantet en o zav evel soudarded o c'hedal Marianna a oa kustum da redek epad nozvezioù, ha, koulskoude, eunn tam aon a grogas euni.

Eunn tam fe, ive, a adsavas en he c'halon, hag eunn tam dre zevosion, ha kalz muioc'h dre spouron, e tennas eus he godel eur chapeled du ha merglet, — seblant ne oa ket laret alies — ha da laret diwar veg he zeod eunn *Ave Maria* bennak.

He c'halon, ha spered a oa holl, du-ze, en hostaliri anveet ken mat ganti elec'h e tispigne an holl weunenig goneet pe laeret a gave en he yalc'h.

Souden, a-drek d'ei e klevas eunn tam touz. Trei a reas da welet piou oa o tout dre an hevelep hent ganti. Mantret e chomas o welet eur pikol den da o tout eus adrek unan eus ar mein hier. E zaou-lagad ru-tân, kerniel uhel var e dal, eul lost hier e pige outan, donetaus ebet! Marianna, hag a oa eunn tam sorserez, hen anaveas diousta. An diaoul e oa, hag e teue evelli warzu ar bourk, nan warzu an iliz, hogen, warzu hostaliri ar Marc'h-Gwenn.

Gwechall 'vije laret e oa nozvez Nedeleg eunn nozvez vinniget; evit ped a dud eo breman ar c'hontrol, eunn nozvez villiget, eunn nozvez diaoulek roet d'an diaruz, ha d'an iferu.

— Salud, a laras Paol gornek. Ne c'hortozez ket ac'hanon? Mont a rez d'ar bourk? Deus ganin, ni 'gerzo buhanoc'h.

Marianna na oa ket aonik. Ouspenn ze, me zouz, ne oa ket he c'henta gwech d'ei da welet Paolig.

— Lez ac'hanon, emei; sed aman da gas ac'hanon endro!... Heja reas he chapeled, evel eur vallam, 'tresek an diaoul. Heman a laoskas eur c'hoarzedan skrijus.

— Da chapeled, emean, 'neus galloud ebet!... N'eo ket bet binniget gant eur beleg.

Gwir e oa. Prenet he doa Marianna he chapeled evit ober neuz da vean kristenez vat, daou pe dri bla araok gant pardon brudet Santez Anna ar Palud.

Tenna a ree anean, gwech an amzer, evit heuilh ar prisionioù, pe an ofern veure, mes biskoaz n'he doa goullet bennoz ar beleg. Koll a reas he hardiegezh. An diaoul he fakas evel ma ra ar c'higer d'eul leue; samma a reas anei war e skoaz, hag en hent d'ar red. Ar paour kez a yude, an diaoul a c'hoarze.

Pedi a ree, gervel a ree an holl zent ha zentez e teue o souj en he spered. An diaoul a c'hoarze hag a rede buhanoc'h...

— Lar da bater, mar karez, emean, Galloud am eus war ar re a zo eveldont oc'h ober goap eus Doue en eur vont d'an hostaliriou da nozvez Nedeleg. Eunn nozvez vat eo evidon. Kargan a ran ma ifern etre nozvez Nedeleg ha nozvez an de kenta 'r bla. Hastomp 'ta! Re-all am eus c'hoaz da gas du-hont.

— Santez Anna, patronez ar Vretoned, 'pet truez!...

— Tav da c'heno, ne blij ket d'in an hano-ze. Ha neuze re ziweat eo : paket out!... Mes setu eur vaouez kropet e-kreiz al laneg evel o klask bleunioù lann.

Ma ve bleun lann en pep amzer, evel m'ouzo'c'h, bleunioù aour n'int ket stank da amzer Nedeleg. Trei a reas he fenn ha gant eur vouez gourdrouzus :

— Petra rez te da houman? a laras d'an diaoul. Lez anei!

Paol gornek a grogas da grenn.

— Pe... tra, tra...? Ma zra eo, Itron...! Pell 'zo bet goneet ganin.

— Gwelet am eus bet anei em fardon, koulskoude.

— Da vad, et a oa 'vit laerez ar perc'hirined hag evan goude.

— Mont a ree d'an oferen fenez?

— Ya sur, da oferen ar Marc'h-Gwenn!

— N'eus forz; eunn tam fe beo a oa c'hoaz en he c'halon. Pedet he deus ac'hanon. Eur Vretonez eo, ha me ive, me zo Bretonez p'eo gwir e choman en Santez Anna Wened.

Hag ouspenn ze, me 'oa o klask petra lakaat gant ar boket-ze 'barz boto koat ma map-bihan evit e Nedeleg.

Ar paour kez ene-man, pa vo gwannet eunn tam gant ar Purkator a blij d'ean keban.

Red e oa da Baol gornek dizamma ar paour kez Marianna. Tec'hel a reas evel eul loch'heden.

Mes Marianna na welas ken nag he lochen nag, a c'hras Doue, tavarn ar Marc'h-Gwenn.

Kavet e oe, d'ar beure, maro mik e-kreiz al lann. En he doru e oa he chapeled, eunn er dudius ha leun a beoc'h war he dremm.

GWELTAS.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUJANAN-CROU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

KRENER-ROUEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

KEMANNOC-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, hall Charner, a zigouret asao.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FERNES AR GER.
Gant brezonek eo deud ar feiz,
Gant ar gallegzoa a vez.
FERNES AR GER.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma va troc'het,
Ouspenn ar Vez. e va Pec'hed
MULS.

Aluzennoù 'vit « Breuriez ar Brezoneg »

Eur mignon, eus Sant-Briek. 20 real.

Gant kalz a joa hag a anaoudegez vat e lavaromp trugare d'ar mignon-man a ro da *Vreuriez ar Brezoneg*, ouспен e arc'hant, eur skoazel nerzus ha kalonek.

BREURIEZ AR BREZONEG

ALI

Gant plijadur vras e welomp e leuer a bep tu da *Vreuriez ar Brezoneg*. Doue ha zant Ervoan da vo meulet !

Kloz eo breman skrivadeg Nedeleg etre ar vugale. 'Beun ar zun-all, e vo laket anan ar prijou ha kaset e lod da bep hini.

Ar vugale a gas o hano da *Vreuriez ar Brezoneg*, herve oa bet laketa disul war *Groaz ar Vretoned*, vo kroget da gas d'e ar gazetenn, ar c'haer hag al labouriou da heul, gant ar c'hentan nive-ren a viz c'houevrer.

Pedi 'reomp start ha kalonek tadou ha mammou da dionered eiz real evit mad o bugale, mad ar Relijion ha mad Breiz-Izel.

An eiz real-ze a vezo paeet d'e en lies a doare, ha ganimp ha gant o bugale.

BLAVEZ MAT

Aotrone ar Renerien,

D'an de kentan 'r bla, an holl dud dimeus an tiegez a gustum heli ar blavez mat d'ar pen-tiegez, d'ar perc'henn. Evel-se, *Kroaz ar Vretoned* a zo ive evel eun tiegez bras ha, dre-ze, e teuan, eun tam diwezat, gwir eo, da heli d'ac'h, aotrone, eur blavez mat hag eurus, dre ma eo c'houi ar pennou, ar perc'henned. Teurvezet eta digemer ar mennoziou a gas d'ac'h an disteran dimeus lennerien *Kroaz ar Vretoned*. Trugare laran ive d'ar Groaz, dimeus ar gelennadurez he deus roet da galon ha da spered kement Breizad he lenn, ha ra gendalc'ho da labourat evit mad hon Bro ger Breiz-Izel hag ar Fe gristen !

Lennet am eus bet e oa bet breur an Aotrou Vallée, ar rener koz, hanvet kabiten e brezel ar Marok. Ma gourc'hemennou !

Y. QUEROU, Leiz-Castel,
Plougouven.

Trugare a greiz kalon d'hon lenner mat a zo ivez eur c'henskrievanier eus ar gwella da *Groaz ar Vretoned* ! Evel ma lar ken mat hon mignon en e lizer, e fell d'imp beza kenetrezoimp, lennerien ha skrivagnerien, evel eun tiegez bras, pep-hini o lakat e boan da rei sikour d'ar re-all, en sell a Zoue hag ar Vro.

AR BLEI O VESA AN DENVED

Lennerien *Kroaz ar Vretoned* n'emaent ket hep goût penôs an deioù tremenet e varvas er « Sened » an aotro Guyot-Dessaigue, rener pe ministr ar Justis. Heman a varvas enpad ma oa tabud diwar-benn an impli fall groet gant arc'hant ar c'houdenchoù gwerzet.

Gret e oe kalz a drouz, hag an hini an em zavas ar muian enep da fallente ha da laeronision mevelien ar Gouarnamant, avokaded, hucherien, gwaderezed a bep ment hag a bep liou ; an hini a zifennas ar gwella gwiriou an dud gwasket, an hini a c'houlennas digant Guyot-Dessaigue, eun de a-raok e varo, konchoù reiz ha leal, an hini a reas d'ezan anzav an impli groet hag ar beilh heuzus a oa bet war peadra ar c'houdenchoù gwerzet, e oa hon mignon mad, an aotro Provost de Launay, senedour, ha maer Penrit-ar-Roc'h.

Gand e gomz kalonek, lemm ha leun a wiziegez, an aotro Launay a c'honeas d'e du zoken kalz dimeus e enebourien.

Ar « bloc », evel just, a yude o welet dizolo e laeronsiou hag e droioù kam ; mes, c'hoaz eur wech, dindan komz nerzus ha testeniou an aotro Launay, peilherien ar c'houdenchoù a renkas dislonka o fec'hejou...

Clemenceau na bardonas ket da Guyot-Dessaigue da vezan diskleriet oberou ha rentet konchoù e vignoned. Ac'hane, deut koz, koz, trubuilhet gant Clemenceau, red d'ezan, eus eun tu-all, rei konchoù skler, skwiz gaud eur maread deveziou labour tenn, ha klav abendall, Guyot-Dessaigue a zemplas a greiz-holl entouez e vignoned mantret. Kerkent e oe savet, mes ar maro an nevoa e falc'het hag hen kasas d'ar bed-all — paour kez ive ! — da welet hag-en oa reisoec'h hag eünoc'h Bardedigez Doue evit hini an dud...

Goude e varo, setu bec'h etre pennou bras ar Gouarnamant oc'h esa goût piou a gemerche e blas.

Eur plas ministr, evel ouzoc'h, nebeut a labour ha kalz a bae ! N'eo ket da vezan disprizet...

Darn a lare heman, darn a hanve hennez ; e vignoned a gomze eus Briand. Den koulskoude na sonje e c'halle Briand bezan ministr ar Justis.

— « Ha perak nan ? » a laras Briand.

— « Perak nan ? » a laras ive ar vlokarded vras...

Kenkouls ha gwelloc'h zoken eo Briand evit eun all... Briand a zo eun den disket, eun den a dalvoudegez, eun den a c'halloud, d'ezan eul lateu vad... En tu-hont, leun a deneridigez enkenver ar Relijion, en-kenver ar Gristenien... Evel ma tigoue d'ar re-man mont alies dirak al lez-varniou, hini ebet gwelloc'h evit Briand n'hall dilulia d'e o faperou...

Groet e oe herve sonj ar Franmasoned.

Briand a zo hirie ministr ar Justis ! Kustum pelloc'h da welet ar Fall hag ar Gaou o ren, kement-man na lako ket ac'hanon souezet. Ar Franmasoned hag ar vlokarded (na reont nemed unan), a zo gouest d'ober pep droug, zoken da lakaat ar Blei da vesa an danved !

Ne gav ket d'in e vefent biskoaz deut gwelloc'h abenn eus o zaol ; ha, breman da vihanan ne dalve ken d'an dud vad c'hoantaat difenn o feadra, na madou o c'herent maro. Ne rafent nemet koll poan, amzer hag arc'hant.

Briand, laer an Anaon, Mestr bras ar Justis, na lez-varn, na barnar na finvo ken en diavez d'ezan.

N'eus ket pell e laren d'am lennerien vad pegen grevus e oa al lezen neve diwarbenn an

douezonoù. Laret a ren e teue Briand dre e lezen neve, da derri bardedigez an holl lez-varioù ha da harz, dre eno, an douezonoù da zistrei, herve al lealded hag ar skiant-vad, gant heritourien an dud varo, pegwir ar Gouarnamant a laere an douezonoù hag a zifenne, evelse, pedi gant an Anaon.

Laret a ren ouспен n'anaveze Briand lezen ebet nemet hini ar c'hrenvan. Evitan nan eus na Justis, na Lealded...

An de ma skriven ar pennad-ze ne sonjen tam e teuje Briand da vezan Mestr bras al lez-varniou. Ne sonjen ket e teuje al laer da varn an dud laeret gantan !

Gallout a rey breman al lez-varniou bihan barn herve ar Wirione ; gallout a rey ar Gristenien goulenn eun tam lealded ; gallout a rey kerent ar re varo goulenn o feadra ; gallout a rey ar venech, al leanezed koz asten o dorn na goulenn eun tammig bara diwar veridigez o c'houent, o manati ; gallout a rey an tadou hag ar mammou goulenn eun nebeut frankiz evit sevel, diski ha kelen o bugale herve o c'hredennoù ; gallout a rey zoken an Anaon paour hirvondi ha klem... Briand, rener Kambr an Deputeed, ministr an Diskadurez hag ar Justis, Briand uheloc'h evit al lezennoù, Briand a lak ar Wirione dindan e dreid hag a denn e deod war an Honestis, a nac'ho gwiriou an holl, a droc'ho hag a valo pep tra herve froulennou diboaell e spered ha c'hoantegeziou diaoulek e galon.

Pell 'zo nan eus Lealded ebet 'n hon Bro. Pell 'zo eman ar Gaou o waska ar Wirione ; da vihana betek breman, kaer he doa bezan mac'het, ar Wirione a c'halle sevel he mouez, a c'halle klem. Breman e vo mouget he mouez, breman e vo flastret !

Ar blei a zo o vesa an denved ; mesast e voint gantan kenkouls, ma ne welfomp en o c'hrevier evit an deioù, nemet drailhader eskeru ha tammou krec'hen labeet a wad hag a bri...

AR YEODET.

AL LABOURER HAG E VUGALE

Labourer ha kemeret poan ;
An douar a vag pep-unan.

Eul labourer prest da vervel
E vugale 'reas gervel ;
Hag e-unan eno gante,
A gomzas evellen oute :

— « Ma bugale, 'me ar pôtr koz,

Ar maro 'zo ouz ma gortoz,

Mes arôk mac'h in me ganti,

Me a ro d'ac'h c'hoaz eun ali.

Ne fell ket d'ec'h gwerzan biken

Nag an ti-man, nag an dachen ;

Ar re-ze eo tra hon zudo,

Lezet ganimp pa oant maro.

Eun tenzor 'zo er park kuzet,

N'on ket pelec'h, nag an andret,

Mes gant forz labour, c'houi deüo

Da gavet zur an dizolo.

An eost, ha pa vezo achu,

An dachen labourer dioustu ;

Troet, distoret anezi ;

Ne choinet ket da argredi ;

Kroget kalonek 'barz ar bal,

Ha, gant ar c'houezen eus ho tal,

C'houi a gavo, mar teurweet.

An tenzor 'zo eno kuzet.

Prest goude, ar c'hoz labourer,

A yee da welet e Grouer.

AR C'HRISTEN

E skol an Aviel hag ar Skiant-Vad diwar-benn ar Gwir-Iliz.

Jezuz a lavaras eun deiz da zant Per : « *Te a zo Per (da lavaret eo maen) ha war ar maen-se me a zavo va Iliz, ha doriou an Ifern (da lavaret eo galloud an drouk-sperejoun) ne vezint bihen trec'h d'esi.* » (Sant Vaze, XVI, 18).

Ar pez a raio da Iliz Jezuz chom evel-se dres ha start en he zav, evel eun ti diazezet war ar roc'h, eo dre maen eus Jezuz lavaret d'e Ebestel, en eur gas anezo da brezeg an Aviel dre ar hed-holl : « *Iliz, kelennit an holl boblou... Setu me o-unan a vezo ganeoc'h bemdez betek fin ar bed.* » (Sant Vaze, XXVIII, 2).

Hor Zalver en deus dalc'het mad d'e c'her ha diazezet, fontet en deus he Iliz war zant Per, evel m'en doa lavaret. He ober a reas pa lavaras d'ezan : « *Bezit pastor va oaned, bezit pastor va danvadesed.* » (Aviel sant Yan, XXI, 15, 16, 17).

An oaned eo an holl gristenien fidel eus an Iliz ; an danvadesed eo ar bastored, an eskibien karget da ren an dud fidel en hent eus ar zividigez, ha d'o maga gant komzou Doue hag ar zakramanchou. Aman, Jezuz a ro da anaout eo sant Per ar c'henta eus an ebestel, ar penn hag ar maen diazezet eus e Iliz. Sant Per d'e dro, n'hell ket fazia, en em drompla, war gwirioneziou ar Feiz, rak d'ezan Jezuz en eus lavaret c'hoaz : « *Me am eus pedet evidout, evit na deio'h het da feiz da van-hout.* » (Sant Luk, XXII, 12).

Ar galloud hag ar renk kenta roet da zant Per a zo aet war e lerc'h d'ar pabed o deus dalc'het e lec'h an eil goude egile.

Ar gwir Iliz a rank beza « *Pilher hag harp ar Wirionez.* » (I Tim III, 15).

An holl Skrituriou-Zakr a rank beza etre he daouarn hag ar garg, ar c'halloud, he deus d'o isplika, ha d'en em zavel bepret a eneb ar gaou : « *Senti ouz an Iliz o zo senti ouz Doue ; disenti outi a zo dizenti ouz Doue.* » (Sant Luk, X, 16) ; ospen : « *An nep ne fell het d'ezan he zelaou, a dle beza kemeret evit eur pagan hag eur publikan.* » (Sant Matheou, XVIII, 17), da lavaret eo evit eun den hag a ya a benn herr d'en em zroui.

Beza ez eus eta eun Iliz, eur relijion fontet gant Jezuz-Krist evit hor c'helen, hon henchta war-zu an Nenv. An Iliz-se, kaer o do an dud hag an drouk-sperejoun ober, a bado betek fin ar bed, rak Jezuz an deus roet e c'her da jum ato ganti, ha Jezuz hor Zalver n'hell mankout d'e c'her.

Aman, leunerien, ema an dalc'h. Pehini eo an Iliz-se, ar gwir Iliz fontet gant Jezuz-Krist? An Iliz katolik, abostolik ha Roman, eo, emou-me. Perak? Ah! abalamour n'eus nemeti hag a zeufe war-eun azalek Jezuz-Krist betek eunomp. Stag eo an Iliz-se ouz Jezuz-Krist evel pa lafeun gant diou chaden vad : unan en aour hag unan en arc'hant, chaden-ar Pabed hag hini an Eskibien. Gwelomp chaden ar Pabed ; mar deo houma start ha diwank n'eus nec'h ebet da gaout gant eben. Eu eur chaden ez eus mellou, lagadennou : ar mell kenta er chaden-ma eo sant Per, kenta vikel Jezuz-Krist, hag ar mell diveza eo Pi X, a zalc'h brema e blas, azezet evel ma 'z eo war e gador e Rom. Ar mellou all eus ar chaden eo ar pabed a zo bet deuet an eil war-lerc'h egile etre sant Per ha Pi X, hep ne ve bet morse torret ar chaden, hep ne ve morse, a lavaran, chomet goull kador sant Per. Henvel a c'helfen ama ar Pabed, an eil war-lerc'h egile, ha pep-hini en e renk a dreuz ar c'hantvejou, hep aon ebet da veza difaziet (an histor anezo a zo em dorn), da veza dislavaret gant den hag a ve e gwirionez gouziek war an traou tremenet.

Ya, an Iliz Romen a zeu war-eun digant Jezuz-Krist, an hini an eus savet ar gwir Iliz. Galloud an drouk-sperejoun, fallagriez an dud difeiz a zo bet en em zavet hag en em zav ato bemdez en he enep, e Franz dreist-holl hirio an de. Gwal ar gwir Gristenien, he bugale, en deus bet redet puilh. Pastored an Iliz n'int ket bed espernet : An tregont Pap kenta a zo bet azezet war kador sant Per epad an tri c'hant vloavez kenta eus an Iliz katolik ha romen, a zo bet holl merzeriet nemet daou. Mes gwad ar verzerien a oa evel eun

had mad hag a lakea da ziwan eleiz a gristenien nevez. Jezuz, hervez e gomz, a jom hag a jomo ganti betek ma vezo ar hed e e zav ; chom a raio evel ma chom e holz an eny an heol, ar stered a sklerijenna an douar.

KATOLI.

ROUE BRO-ZAOZ HA LEANEZED FRANS

N'eus ket gwell bell 'zo, eun nebeut leanezed harluet eus Frans a arne en porz-mor bras Southampton o vont da Londrez.

Paour kez leanezed ! Pegen souezet e oent, pegen iskis e kavet pep tra, etouez tud o kaozeal eur yez dianavezet, e kreiz eun engrouez evel ne weler en ker vras ebet en Bro Frans, na zoken, en Paris. Unan ane hepken a ouie Saozneg ; mont a re du-ma, du-hont, he leanezed o heuilh anei vel eur bagad denved, o klask eur c'houmbot, evito o unan, 'harz an tren a zivogeda tost d'al lestr dre dan.

Sionaz, re zivezat e oant, tud eleiz en pep kar, nemet eur plas pe daou e pep hini.

Gwall nec'het e oa ar paour kez leanez. Petra d'ober?

Mont da gaout pen-rener ar gar, ha displegan d'ean he zrubiilh. Just, setu o tout eun den oajet, eun nebeut aotrone o heuilh anean, i gwisket evel aotrone o vont war vor, eur « gasketen » wenn war e benn.

Douetians ebet ! Setu pen-rener ar gar ha beachourien adrek d'ean o vont, evelti, da c'houlenn digantan eun dra bennak. Ar paour kez Gallez a yeas da gat anean, ha, gwelikan m'hallas, gant e zaozneg draihet, e displegas ar pez a c'hoantae.

An otro he zaludas gant ar brasan gres vad, hag a roas eun urz. Dioustu, setu eur c'har kenta klast staget ouz an tren :

— Evidoc'h, emean.

— Mes, otro, a respontas al leanez, n'omp ket evit beachi en kentan klast ; ni 'zo paour kez leanezed argaset eus hon bro : an drier klast a zo mat a-walc'h evidomp.

Mousc'hoarzin a reas an otro, ha gant eur jestr evel o laret : me 'zo mestr aman :

— Pignet bepred, e laras, hastet, an tren a ya da vont kwit. Hag en eur zaludi evel ma ra ar zoudarded, a kimiadas...

Pemzek de goude, hon leanez a oa en Edimbourg, ker-benn Bro-Skos ; kaset oa di da glask eun ti evit al leanezed, dre n'he devoa ket kavet en Londrez.

Mont a reas da welet eun otro bras, eul « lord » katolik ha madelezus kenan.

Goude ar c'hentan gourc'hemennou :

— Anveout a ran dija ac'hanoc'h, a laras al « Lord », me zonzj am eus gwelet ac'hanoc'h en Southampton pa oac'h o kaozeal gant hon Roue.

— Ar roue, otro, fazia a ret, pe ober fent?

Ni, paour kez leanezed, n'omp ket kustum da gaozeal gant rouezed.

— Ne c'hoarzed ket, ma c'hoar gez, ha ne garfen ket ober.

Ne ouiech ket, evit sur, ouz piou e komzech an de-ze.

An otro gant ar « gasketen » wen hag a oe ken madelezus en ho kenver ; an hini a gredec'h a oa pen-rener ar gar, ne oa nemet e Veurded Edeonard VII, roue Bro-Zaoz hag impalaer an Indez.

Hag evel ma oa al leanez vat souezet bras hag eun tam mezek hag e klaske eun digare bennak.

— Netra, ma c'hoar gez, netra, plijadur vras ho peus gret d'hon roue. N'eus forz, ne ven ket ali d'ac'h da vont en eun hevelep giz da gaout ho prezidant.

Bet on en Paris meur a-wech ; gouzout a ran mat petra 'vije c'hoarvezet ganac'h.

Troet eus ar galleg.

GWELTAS.

MAM-GAER !

Bean oa eur wech eun ozac'h yaouank hag e wreg hag a oa o tere'hel douar 'n eur barouz a goste Kerne. Bean o devoa zaoud, moe'h, kezeg ; mes eur vam-gaer o devoa ive, mam an ozac'h, hag a oa drouk ouz he merc'h-kaer, pez a halle

bean. Marteze he devoa aon ne deuje houman da lakat he dorn war hec'h arc'hant, rak an hini goz a oa tost hag he devoa zerrit eur c'huziad mat a beziou melen. Arru 'oa koz ; koulskoude ne varve ket : « *Ar wrac'h-houarn-ze, 'me ar verc'h, houme 'zo danve enni 'vit pell.* »

Setu tremen a reas 'barz ar vro eul leunerez planedennou, eur c'halomperez du hag hudur, eur zellou binimus en he feon. Ha Katel, (Katel 'oa hano ar wreg yaouank), o vont da gaout anei.

— Pegement, emei, e kousto d'in, gouzout an doare da gas ma mam-gaer d'ar bed-al hep ne wezo den ebet?

— Kant skoed, merc'h vilhan, eme ar wrac'h du. — Nebon, ker e oa ; n'eus forz, dispakan reas ar plac'h kant skoed, hag ar vorianeze goz a lavaras d'ei :

— Roet an hano a vam-gaer d'unan eus ho loened ; gret d'ean vilan m'hallfet, ha pa varvo, ho mam-gaer a varvo ive.

Mat ! Setu Katel d'ar ger, hag o c'hervel raktal « mam-gaer », eur viorc'h biskorn he devoa e-mesk ar re-all, ha na roe ken na leaz nag aman.

Adalek an de-ze, c'houi 'lar, n'e ket an toliou baz a vankas d'ar viorc'h paour ; liesoc'h a vac'had hag a dol troad he dije 'vit a blouzen da zibri. Ha c'hoaz petore plouz? Ar restajou dastumet dindan bruched ar re-all a vije slapet da Mam-gaer. Da Mam-gaer, an trenjou kol kaset evel koat, ken n'halle ket he c'hoz dent diskolpan pez ebet diouts ; da Mam-gaer, bannac'hou dour brein, dour hawe dent diwar an teilh. Mam-gaer n'he dije nag eun dornad foen, nag eun irvimen, nag eur banne dour tom, nag eur c'heunne vrenn :

« Troet du-man, Mam-gaer ! » Dao ! Eun tol troad.

« Et d'ho korn, Mam-gaer ! » Dao ! Eur vac'had.

M eus ket ezom da lavaret d'ac'h ; 'benn oa bet tri pe bevar miz ar viorc'h paour, o vevan gant toliou baz, plouz brein ha dour hawe, ne chome ken ane nemet ar relegou. Ne oa ken, nemet a-boan, 'vit sevel da vont er-meaz. An ozac'h a lavaras d'e wreg :

— Perak e teus hanvet ar viorc'h-ze Mam-gaer ha perak e skoeg warni evelse?

— Gwelet a ri divezatoc'h, emei ; lez ac'hanon d'ober ma fenn !

Ben a reas eur c'hruz d'e zionskoa ha ne laras netra ken.

Hag ar vam-gaer, ar wrac'h-houarn, penos e oa he c'hont? An hini goz na re van ebet 'vit keio ar viorc'h da vean pilet. An de ma vanas ar viorc'h hep sevel, an hini goz a zavas, hi, beure mat, da vont e ker da di an noter, da lakat hec'h arc'hant war interest. Sart e oa seurt biskoaz.

Katel a yeas d'ar c'hraon, hag a diskargas he c'houunar war ar viorc'h hanter-varo.

Dont a reas an abarde ; ar viorc'h na varve ket, hag an hini goz n'arve ket er ger. War-dro kuz-heol, Katel a yeas adare d'ar c'hraon, eur pikol treujen ganti, 'n he dorn, pez a halle da zougou : « *Oc'h o sevel, Mam-gaer !* » 'Benn devoa bel tri pe bevar dol, al loen paour a astennas e beder c'har hag a varvas mik. Laouen ar plac'h ! Tol a reas an dreujen, ha d'an ti da lavaret d'he fried :

— Maro eo Mam-gaer ! emei.

— Gout a-walc'h a ren, emean, e teujes eun dro bennak a-benn da laz anei.

War an tol, hag int o klevet unan e toull an nor. Katel a zonzas : « Daoust ha mam-gaer a zo arru ? » Mes ne deuas den en ti.

— Ha petra, eme an ozac'h, a vo gret gant an dra-ze?

— Plantan anei, emei, e liorz penn an ti, dindan ar ween her.

— Kouz eo neuze ober raktal.

Mont a rejont d'ar c'hraon ha lakat relegou ar viorc'h war ar c'hravaz : ne oant ket pouner. Gret 'oe eun toull dindan ar ween ha plantet al loen, e nebeut amez.

— Petra 'fo gouneet o vean gret kement-all? eme an ozac'h.

— Gortozomp, emei ; piou 'oar?

An hini goz n'arve ket er ger. Mont a rejont da gousket. Ar wreg a dide 'n eur zonzal : Maro eo ; gwir devoa lavaret ar zorserez koz !

An de war-lerc'h e savas beure mat 'vit mont da glask kelou. Mes a-boan e oa d'ei benn digoret an

nor, o tout en ti eur barner ha tri archer; ar re-man a grogas warni ha war he den.

— Petra 'm eus gret-me? emei.

— C'houi, eme ar barner, ho peus lazet ho mam-gaer hag interet anei en liorz penn an ti, dindan ar ween ber.

Dirollan 'reus da c'hoarzin.

— Ya, emei, eur vloc'h d'imp a zo marvet hag hon deus plantet el liorz!

Klasket 'oe benvien, hag e oe distouvet an toull. Katel hag he den a 'n em zelle hag a c'hoarze.

Souden, unan eus an archerien a grogas en eun dra bennak; ben da jachan... Petra deus gantan? Brech eur plac'h koz freuzet he dilhad, toulllet he fenn ha hi goloet a wad.

Katel hag he den a oa seizet gant ar spont.

— Tapet dour ha gwalc'h-het-hi! eme ar barner. Gwalc'h-het e oe dremm an hini goz, hag an daou bried, straflihet krenn, a anaveas neuze o mam.

Bloc'h ebet, avad, na oe kavet. Chadennet e oe an daou « dorfetour » ha kaset d'ar prison. Barnet e oent da vean krouget, hag ar pez a laras ar varnerien a oe gret, krouget e oent o-daou.

Elovez ar re a oa o welet krongan-ane, e oa unan goz. Ju hag hudur, sellou an ifern en he fenn, hag a c'hoarze....

DIR NA-DOR.

AR WIRIONE PEP SUN

Pep-hini a goms eus e du? —
Nan, amañ n'eus tu 'met ar Wirione!
Pe blij pe ne blij ket.
Ar Wirione eo red laer.

Komzet hon deus bet amañ c'hoaz eus arc'hant ar c'hounenon laket e gwerc' goude ma oe chaseet ar venec'h hag al leanezed, hag hon devoa lavaret n'e ket en godel ar vicherourien, nag e kef ar gouarnamant e oa et an arc'hant, mes en yalc'h an advokaded, an hucherien, an holl dud a lezen, a zo diredet 'trezek ar c'hounenon evel ma nij ar brini d'ar c'herc'h, hag o deus dizaret ar park ha kaset gante kement munut mad a oa ennan.

Herve klevet Waldeck-Rousseau, breman 'zo pemp bla, hag e gonsortet war e lez, ar Republik, teneraet he c'halon a vamm o welet stad tris ar vicherourien war o c'hozui, a oa o vont da lakat ar weiz war ar venec'h hag al leanezed, tud didalve, tud mat da van, ha da lakat o feadra da vagan an dud koz brevet gant al labour.

Forz pegement a drue 'zo dleet d'ar vicherourien arru war an oad, n'e ket da c'hodel ar venec'h e oa d'ar gouarnamant mont da glask arc'hant evile; mes, e gwirione vat, ma 'n eus gwerzet treo ar venec'h, nag ar vicherourien nag hen n'int pinvidikoc'h a ze.

Ma karet lezel a goste ar gir « Republik » hag ar « gouarnamant », girion goulou, pechon stignet da dapout ar zodien, ha ma karet gwelet petra 'zo drek, c'houi gavo eur vanden laeron o kargan o godello gant madou Frans, o tervhel ar zac'h an eil d'egile, o 'n em zikour an eil egile da bignat er c'hignol, hag o stlap gant an dud, 'vit touellan o spered, girion kleuz: *mad ar Republik*, emeint-i, a glaskout, ha netra ken.

Gwir eo; mez int eo ar « Republik », hag ar venec'h n'int ket; ar velsein n'int ket; ni n'omp ket!...

Elovez al laeron zoken, 'zo zavet eun tam diskrog. Al laeron en em glev betek ken na ve red ober lodennoù. Madou ar venec'h, herve, n'int ket bet rannet, evel ma oa dleet, etre an holl; hag ar re n'o deus ket bet loden frank a c'hourdrouz hag a glemm. Komb koz, hen e-unan, a lavar breman 'zo bet gret konchou faoz. Ar gouarnamant, emean, an evoa prestet arc'hant da veur a « liquidateur », hag ar re-man, goude bean gwerzet treo ar c'hounenon, 'zo chomet hep pæan ar gouarnamant. Petra deus gret gant o arc'hant?

Ar zun-all, 'barz ar Sened, an otro Provost a Launay a c'houlle memes tra. Red eo, emean, hanvan tud da hadober ar c'hounenon, ma vo gouveet pelec'h eo et an arc'hant!

'Barz ar goul kaset d'ar ministr e weler an otro Millerand paet *dek mil lur* 'vit bean komzet diou wech 'barz en gwerz Leanezed Santez Mari a

Loreta. Eur wech hepken an evoa komzet hag e oe paet *dek mil lur*.

Eun advokad-all, Patry, a gomzas 94 gwech en eun eur, ha paet e oe 10 skoed bep gwech. Ezet eo goul't ne lare ket nemeur a dra bep tol, ar girion-man hepken: « kement-ze n'e ket gwir; me a zislar »; peotramant: « Asanti ran gant se ». O vean lavaret 94 gwech ar girion-man 'n eun eur, 'oe kontet d'ean 94 prezegen ha 2820 *lur* evit e eurvez.

An treo-ze holl a zo skrivet war ar c'haer kaset da Brezidant ar Republik ha da vinistr ar Justis.

Ha breman, c'houi 'wel, lennerien ger, pegent gwir eo lavaret emañ Frans dindan galloud eur vanden laeron a zo deut a-benn da lakat o zroad e pal an arc'hant.

Darn a laer 'barz ar c'hounenon; darn-all a laer er Gambre, hag an hevelep re int alies. Goude bean votet kresk war e bas ha tapet daou vil skoed ar bla ouспен da lakat en e c'hodel, an depute franmason, ma eo advokad pe hucher pe eun dra bennak henvel, a ya da gaout eul « liquidateur ».

— Daoust, emean, ha n'hallfec'h ket rei d'in eun tam gopr bennak?

Hag al « liquidateur » a ginnig d'ean kant skoed, mil lur, dek mil lur, 'vit ar boan da vean gwisket e zae ha lavaret eun nebeudig komzou dirak ar varnerien.

Evelse al laer a dap gant e zaou zorn; goude bean laeret er Gambre, ec'h a da laerez d'ar c'hounenon; hag al laer-ze, piou eo? Eun depute, eur ministr, ar re a zo karget d'ober al lezen, da viret an urz, da lakat ar peuc'h, da rei ar skouer vat, da c'houarn arc'hanoimp.

E.

KELEIER EUS AR BEB-OLL

Ar vot kentan. — Gant miz mae 'vo vot ar mériou, eur vot hag an eva talvoudegez vras, p'eo gwir, hiziviken, etre daouarn ar mër, eo laket, koulz lavaret, huc ar relijion en pep parouz.

Al listennou vot a zo da hadober ha da hadwelet.

Adalek ar 15 a viz genver, betek ar 5 a viz c'houevrer, pep den en oad da voti da hallo mont da welet al listen d'ar méri hag a hallo goulenn ma vo rasket pe merket an hanoiou a vo mat raskan pe verkan.

Dindan ar skorn. — Dimeurs diwean, stank vras koat Boulogne, e kichen Paris, o vean skornet, kalz a dud a oa dent da ruzikat warni. Mes en eur c'horn anei e oa krog an diskorn. Eun tregont bennak a dud o vean et di da ruzikat, e torras ar skorn gante hag e oent lonket holl.

Eun dek bennak ane a zo beuet.

Al laer en Cherbourg. — An dizurz a zo dre holl en stalon-labour ar Gouarnamant, en Cherbourg koulz hag en Toulou. Al laer a zo er gêr eno, a vale dispart hag a zibab, dinesc'h, seurt a blij d'ean kas gantan.

En Cherbourg 'zo o paouez bean laeret paperou a dalvoudegez vras hag a zo gwerzet marteze, 'beun breman, d'ar Prus pe da Vro-Zaoz.

Eur mekanig nijal. — Dimeurs 'zo c'hoarvezet en Paris eun tol kaer. Eun den, e hano Henri Farman, a oa 'houe pell 'zo o labourat war eur mekanig nijal dishenvel eus ar « ballon », dre nan eus ennan aezen ebet. Eur priz a hanter-kant mil lur a oa evit kentan hini a deuje abenn d'ober eur c'hart leo en er gant eur mekanig evelse, 'n eur ober, hanter-hent, eur pleg berr endro d'eur post.

Henri Farman, oajet a 33 vla, gant e vekanig hag a bouez tremen eur milier, a reas an droze, o nijal war bouez 15 troatad 'us d'an douar, en eur yunuten hanter.

Biskoaz c'hoaz ne oe gwelet kement-all.

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

CLOHARS-CARNOET. — Eun torfed euzus. — An den meo 'man an diaoul o tougen anean, red 'vijo lavaret.

Ar zun-all, daou boir, daou grennard, koulz lavaret, unan oajet a 16 vla hag egile, 18 vla, a oa oc'h evan haunac'hous eus an eil hostaliri d'eban, pa zavas krouz etreze diwarben netra.

An hini yaouankan a ziskaras egile hag a dar-c'haas gantan ungen tol kontel 'n e benn. Mes gwasoc'h 'zo. Zodet krenn gant ar gwad o redek hag an evaj a oa 'n e benn, e savas war e c'hlin pen e gamarad hanter-varo hag e troc'has e c'houg d'ean, ken e torras ar gontel.

Gwasoc'h 'zo c'hoaz.

Neuze e tapas e votou koat hag e tornas war ar penn-ze c'han m'an evoc torret e votou. O hauz! Malloz d'ar gwin-ardant, ha malloz ive da galz a hostizien! Ma ve en hon auzer kalz a dud daouet, war an hostizien e kouec ar bec'h pounneran. N'eus pech'ed ebet a gement ne werzont ket an had anean.

CONCARNEAU. — Tan-gwall. — Disul da noz, an tan a grogas en eun ti bras marc'hadourez, ti Ramel. Kement mad a oa a oe devet, an ioul a oa er c'haioiu o vean zikouret eus an tan.

Evit pemp kant mil lur koll a zo.

LOCOAL-MENDON. — Taperien. — Ea Locual-Mendon, eur barouz a Vro-Wened, e tremenas, ar zun-all, eur vanden galomperien gant kirri hag oursed.

Setu eur plac'h o tout e ker o lavaret a oa nave c'hanet daou boir bihan en unan eus ar c'hirri hag e pede an dud vat da rei zikour 'vit o badezi ha kaout d'e hep a vaihuren hag a wiskamant. Kalz a dud a roas d'oi arc'hant ha treo. Betek an otro person a lakas ar vadeziant da der eur, goude ar gouspero.

Mes epad ar gousperou, ar galomperien a dec'has kwit ha ne oe klevet kelo ebet ken nag eus arc'hant nag eus badeiant.

LANDIVIZIO. — An otro Huon dirak al lez-varn. — Hon lennerien o deus c'hoaz sonj vat, sur on, eus an torfed a lakeas ar skrij e Landivizio hag er vro a-bez tremen tri miz a zo.

Ar marc'her, 28 a viz east, e yoa deiz marc'had e Lanndi; nebet a dud a yoa e kear d'an deiz-se, abalamour d'an east. Setu ma red ar c'helou evel eul lue'heden: Haou en deus tennet wai Lesconec!

Huon a yoa kiger e Lanndi, ha Lesconec en doa an hevelep micher e Lesneven. Gwarizi a leverer a yoa etrezo. Mes, nak a dud a yafe da welet o zadou, kentoc'h evit ar mare, ma vije gallet tenna warno abalamour ma reont diez da unan en e varc'hajou! Ar venjanz a zo da Zoue, arabat eo hen ankounac'haat.

Huon, koulskoude, a yoa est dounoc'h en ti, goude beza tennet war ar c'higer didrabas, hag eno e tiskargas e bistolen en e benn, o klask en em laza ive d'e dro. Ne varvas ket evelato. Chomet eo a-c'houdevez diou pe deir zizun etre ar vuez hag ar maro, ha p'eo bet gwellaet d'ezan eo bet kaset da c'hlanvdi Montroulez, ha goude-ze d'ar prison.

Ena bet dirak lez-varn Kemper. Tamallet eo bet da veza gwall-skoet hepken, hep kaout ar mennoz da rei taol ar maro. Daou vloaz prison en devezo da ober.

TREGER-GOEL-KERNE-UHEL

AR ROC'H. — Vot. — An 2 a viz c'houevrer a vo vot en kanton Ar Roc'h evit hanvan eur c'hon-sailher jeneral, an otro Rolland o vean bet torret abalamour d'e droiou kanfard.

PERROS. — Vot. — An 2 a viz c'houevrer a vo vot en kanton Perros da hanvan eur c'hon-sailher jeneral, an otro Gao o vean bet zerrret er prison abalamour d'e doliou filoutaj.

PLEUDEL. — Kouest 'n eur vengleuz. — Jean Keromès, eus an Dreinded, a zo kouest war eur bern mein, en mengleuz Traoumeur, ha gwall dizet e c'har hag e zorn.

PLOUËC-AR-MOR. — Eul laer dispart. — Bogard, mengleuzier en Plouëc-ar-Mor, a oa et e wreg hag hen eus ar gêr. 'Benn e tizroas, o kavaz an diou vaz houarn oa o sparlan e frenestr torret hag ar brasen dizurz en ti. Mes al laer an evoa kollet e amzer; 'n evoa kavet nemet 18 real.

E vibien krenn ha stumet mat
A grog neuze da labourat.

Arc'hant en dachen ne oa ket,
Mes eun eost ar c'haeran oa bet,
Ha, bep bla, e vije goude
Eleiz a dreo 'barz ar park-ze.
Fur bras e oa bet ar gentel
Gret gant an tad arôk mervel
D'e vugale 'dije evor
Penôs labour 'zo eun tenzor.

Pell amzer 'zo am eus klevet
Oa Lafontaine eur barz brudet ;
Displegan 'ra gwirioneou,
Ha da galz e ra kentelioù.

Y.-M.-S. koz labourer.

Alc'houe hon Liberte : ar Brezoneg

Foeli da « Chas ar C'hallaoued ! » — Eur skol
vrezoneg 'vit ar vugale dre Vreuzier ar Brezoneg.

Red eo d'ar Vretoned, dirak an holl mennoziou
ha hunvreou a red ar bed kas sorc'henni spe-
rejou, bean war evez ha diwall ne deufe ar men-
noziou-ze da noazout ouz ar « vue vretou » a zo
gwir vue o spered ha n'o deus hini-all ebet ne-
meti.

Doue hag ar Vro ! Setu eno reolen hon bue.
Kement tra a zo dismegansus 'vit Doue hag evit
Breiz, kement-ze a die bean tolet a goste. Ouspene-
ze, n'e ket mat heuilh an nep a ra e zizeblant
eus yez, kiziu hag istor Breiz-Izel, hon Bro
War digare kalz a hunvreou hag a gizioù neve,
ec'h ankouaer e Vro hag e werzer e spered d'an
estranjour. Mes sonjomp penôs, dreist pep chan-
chamant a hallfe c'hoarvezout, Breiz-Izel a die
chom, evel ar vag war wagennoù ar mor diroll,
hag eo d'imp eo d'he derc'hel plom war an dour.
War digare heuilh kiziu neve ha chanchaman-
chou, ma teu hon Bro da vont da goll, hennez 'vo
eur *chanchamant* ha na vo digollet d'imp gant
chanchamant-all ebet, rak, dreist da bep mad,
eman ar vue hag al liberte.

Pa glevfet komz dirakoc'h eus neventiou mat
da wellat stad hon Bro, lavaret hep aon penos
gwrien pep gwellaen eo hon spered, hon yez, hon
c'hizioù, tra beo gwest da greski ha da dol pep
seurt freuz.

Ma klevet lavaret penôs gwrien pep galloud,
pep gwellaen a zo en « demokrasi », pe er « repu-
blik », respontet penôs, da gentan, gwrien pep
galloud 'zo evidomp en karante, studi hag anaou-
degez *spered hon Bro*, da laret eo, o anaout hon
yez, o tanva hon soniou hag hon c'hizioù, o teski
bue ar re o deus krouet Breiz-Izel, eno e kavomp
sklerijen ha nerz da vont, e gwirione, war rôk.

Ni, Bretoned, ken pell 'zo gwasket diudan eur
Vro-all, ne zantomp ken ennomp t'n karante hon
Bro evel ma sante, breman 'zo daou pe dri c'hant
vla, ar re goz ha n'o devoa biskoaz tanvaet
« gwin ar C'hallaoued », d'ar c'houlz ma oa Paris
en Roaon, da lareteo, pa oa gouarnet Breiz gant Breiz,
pa oa Breiz-Izel ha Bro-C'hall 'vel diou rusken dis-
henvel ha distag an eil diouz eben, pep hini ane o
labourat eus he zo hec'h-unan, pa ne deue ket ar
C'hallaoued, gwesped divergont, da zunan ar mel
en rusken ar Vretoned ha da blegan ane en o
servij.

Ya, koulz 'zo bet hag e oa Bretoned en Breiz.

Red eo d'imp hadc'houean en hon c'hreiz an t'n
birvidik-ze, ha disprizout kement a hallfe, kalz pe
nebeut, dizrei hon daoulagad diwarnomp hon
unan.

E tu-hont da Zoue ha da Vreiz, n'eus man, 'vit
breman, din a zoujans abeurs eur Breton. Ke-
ment na denn ket da vad ar Relijion hag ar Vro,
n'eus talvoudegez ebet.

Ar Breton a die barn pep mennoz dious ar vad
pe diouz an drouk e tenn war ar Relijion ha war
e Vro.

Digoromp eta hon daoulagad war an danve
breton ha kristen a zo oc'h ober pep hini ac'ha-
nomp ; studiomp piz an danve-ze, hag e c'houe-
fomp gwelloc'h 'vit madou, rak gounid a refomp
nerz-kalou, sklerijen ha hardiegez.

Perak e lavarer eus ar Breton eo goue, divalo
ha divezat ? Ezet eo goût. Spered ar Breton n'hall
ket bean digor war an treo-all ma n'e ket bet
digoret, arôk, warnean e-unan hag ar pez a apar-
chant outan.

Mes spered ar Breton n'hall bean digoret nemet
gant an e-unan ; en hon dorn, en hon *geno* 'man
an alc'houe a die digeri frank hon spered, evit ma
hallo bevan, kreski ha bleunian. Pevar c'hant vla
'so, ar spered breton 'zo 'vel prizoniet en eun
toul tenval, elec'h n'arru gantan nag er na golo.
Mes betek breman, alc'houe e brizon a zo chomet
gant 'tre e zaouarn : kaer an eus bet ar Gall ésat
diframman digantan an alc'houe-ze, ar paour kez
Breton a stourme, gant esperans da c'hallout, eun
de zaludi c'hoaz bolz an ne ha golo an de.

Hirie, ma kar ar Vretoned chileo ouz ar mone-
ziou a deu aman d'o c'helen ha d'o gervel, an de
ma vo tennet ar spered breton a zindan gazel-je, a
zo prest da baran. Petra fell ken ? Lakat en im-
pli an alc'houe ; ha pehini eo an alc'houe ? Ar
Brezoneg.

Ya, ar Brezoneg, ar yez ken ker da galon pep mad
mat a Vreiz-Izel, hennez eo alc'houe hon liberte !
Bean 'zo Bretoned, siouaz, hag o deus stlapet an
alc'houe-ze pell dioute, gant kalz a fae hag a
dismegans ; deut int da garet o stad truezus, da
lipat an dorn a wasko goug hag ar chaden a vorz
o zreid hag o daouarn : deut int da vean « chas
ar C'hallaoued. »

Ya, « chas ar C'hallaoued », ar Vretoned-ze
staget gant chaden ar sklavaj ha maget, a blijadur
kaer, gant ar bevans binimus aozet en toullou fall
Paris.

« Chas ar C'hallaoued », ar Vretoned-ze a dre-
men o bue o harzal war kement seurt mad a zo
en o Bro. Ar re-ze a lavar : Foeli komz ar Bre-
zoneg ? Ze 'zo mat 'vit ar baizanted ! Dougen
kouef pe gwiskamant breton ? Mez am ije 'mesk
an dud-all !

Pa glevfet pôtr pe blac'h gant poziou divalo
seurt-ze, lavaret :

« Me glev « chas ar C'hallaoued » o harzal.
Foeli d'ar chas gall !... »

Hini ac'hanomp, a dra zur, n'houlfe bean lakel
en renk chas ar C'hallaoued.

Tad na mam Vreton ebet n'houlfe gwelet o
bugale o vont da « chas gall ». Derc'hel sonj mat
neuze penôs ar pez 'zo kaoz d'è da vean tud ha
nan chas, eo dre ma int Bretoned, ha, pa golfout
an hano a Vreton, e kolfout an hano a den, hag e
kouefout en renk ar chas, « chas ar C'hallaoued ».

Daoust ha breman ne fell ket d'ar C'hallaoued
zevel bugale ar Vretoned evel chas ?

Daoust hag-en er skolioù n'e ket difennet zin
ar Groaz, zin ar C'hristen, hag ar Brezoneg, zin
ar Breton ? Daoust hag-en, pa 'nevo ken ar bugel
an daou zin-ze da lakat 'n e c'heno ha 'n e ger-
c'hen, daoust hag-en 'vo kalz a dra e tu-all d'eur
c'hi ?

Diwallomp, Bretoned, da lezel ober ganimp ha
gant hon bugale chas mat da harzal ouz toull dor
ar C'hallaoued ha da zibri en skudel ar c'hi !

'Vit diarben ar gwall-er-ze, petra d'ober, c'hoaz
eur wech ? Miret hon Brezoneg, deski e lenn hag
e skrivan. Ma oc'h re goz 'vit mont ken d'ar skol,
kaset ho pugale, da vianan, da skol ar Brezoneg.

Kaer ho po laret ; Brezoneg a-walc'h a desko
ganin er gêr !

Ze n'e ket gwir !... Neuze 'ta, ar Gall bihan
n'aje biken d'ar skol, p'eo gwir e komz galleg er
gêr !

— Mes, eme-hoc'h, me n'auavean 'nep lec'h skol
vrezonek ebet !

— Eo, zavel 'zo unan, eur skol hag a roo eur
gazeten vrezoneg bep sun da lenn, *Kroaz ar Vre-
toned* ;

eur c'haier da skrivan brezoneg ;
labourioù d'ober eur wech ar miz ;
prijou eur wech ar bla ;
freuz ter oferen evit goulen zikour ha bennoz
Doue war al labour ;
ha kement-ze holl evit...
S real.

N'eus pep bugel nemet kas e arc'hant hag e
hano da *Vureo Kroaz ar Vretoned*, 27, bali
Charner, Sant-Briek, hag a-lek neuze e vo

pleet gantan gant kalz a aked ha kalz a levenez.

Raktal vo kaset d'ean eur c'haier, hag eur wech
ar miz, gant e gazeten, an evo eur paper merket
warnean ar pez an evo da skrivan war e gaier ha
da zeski dre 'n envor.

Tadou ha mammoù, n'ho pet ket eta a gertri da
lakat ho pugale war roll *Breuzier ar Brezoneg*.

P'eo gwir n'houllet ket ober gante « chas Gal-
laoued », tud hag a vo, diweatoc'h, traitour d'o
bro ; p'eo gwir n'houllet ket ober gante « chas
franmasoned », tud hag a vo, diweatoc'h, traitour
da relijion o zud koz, kaset o hanoioù da *Vre-
zier ar Brezoneg* zavet evite, da zeski d'e dougen
dorn bepred d'o Bro Breiz ha da Zoue.

DIR-NA-DOR.

AN EVNIG

War dôn : *Sôn an Durzunel*.

Eur zolvez, d'an abarde, me a oa o pourmen,
Pa glevis eun evn o kanan 'bars en beg eur ween ;
Heman oa eun evn bihan, henvel ouz eun eostig,
Bean 'n evoa eur vouez draut, henvel ouz eur muzik.

Ha me o chom krenn 'n em zav, kazi 'vel souezet,
'Greden ket d'ar mare-man e kaue an evned ;
Ze oa 'bars en miz gouver, an amzer a oa kri ;
Souezet oan o klevet an evn o fredoni.

Me chom neuze d'hen chilaou eno, eur pennadig ;
Disken a eure d'an traou, a vodig da vodig,
Hag hen lavaret d'in-me, freaz mat d'in da glevet :
— Aboue hirie 'zo eiz de n'am oa ket da welet.

— Mes penôs, evnig bihan, e lavaris d'ean,
Penôs c'hallez te kana ha komz yez ar vro-man ?
— Me, 'mean, zeskas kana ha komz yez Breiz-Izel
Dre zoniou kaer ar varzed, ma mignoned fidel.

Kenderc'hel reas da gana, ha, dre e vouez sklintin,
'Lare d'in 'doa ma gwelet diudan eur ouenn ivin,
O kozeal, eur zolvez, gant eur mignon leal :
« Ouz e gellennadurez, te a diefe pleal. »

Neuze, prim, a den-askel, 'lec'h an evn ac'hane,
Ha me a chomas eno, kazi 'vel 'n eun hunvre,
Da sonjal, da envori e chomis eur pennad :
« Ma, 'velkent, an evnig-man nan e ket eur
[gaoniad ! »

Eul Lenner.

BRIZ-BREZONEG

Eul lenner eus Plougonver a gas d'imp an
doareou lavar fall-man. Trugare d'ean a galon
vat.

Embêtet e oa.

Prezantet 'n evoa d'in.

Me 'm eus *depêchet* da zout.

An train an eus *retart*.

An union a ra nerz.

Ramassez ket an dra-ze ?

Ze 'zo *sinjerioù* !

Ze 'zo *certen* !

Setu aze tud *capabl*.

Te 'zo eun den *vrai*.

Hennez n'e ket ken *imbisil* 'vel a sonjez !

Poent eo *dibrouillan*.

Explik ze d'in.

Ar merk 'zo *effasel*.

Hennez 'zo *instruet* mat.

Kommandet 'zo d'in.

Konsanti a rez ?

Gra *attanson* a zo.

Mar 'mije bet ar *bonheur*.

Eun *exempl* eo.

Kourajus eo.

Hennez 'zo *ambitionus*.

Y. Q.

Arzun-all vo divanket.

Le Gérant : F. GOUETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

ROUMAN ANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù heñvel.

RENERENN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMMANOÙ-KONVERZ

* An Aotrou Toussaint, 27, ball Charnier, a zigemer arzo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoaz en Breiz.
Fenez ar Geiz.
Gant brezonek eo dind ar feiz.
Gant ar gallekennio a Vreiz.
Fenez ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma vo trec'het,
Ouspenn ar Vez, e vo Pec'h d'ho di.
MILIN.

ALUZENNOU "KROAZ AR VRETONED"

An otro Francis Even, Landreger. 4 real.

Aluzennou 'vit « Breuriez ar Brezoneg »

Eur mignon, eus Sant-Briek. 20 real.
An otro Francis Even, Landreger. 8 real.

MEULODI DA "GROAZ AR VRETONED"

Unan eus lennerien koz ha gwellañ mignoned
Kroaz ar Vretoned a skriv d'imp :

... Divezatoc'h, marteze, e kasin eun drañ ben-
nak c'hoaz d'ar *Groazig*, ar beuhez d'adus-ze.
En gwione, eun tenzor eo evidomp-ni, Bretoned,
hag eur dead eo d'imp rei digemer ha harp d'ei
ar gwellañ ma hallomp.

Biskoaz ene Breiz n'he devoa bet c'hoaz eur
vouez ken rik-all evit meuli he brasderioù, kanan
he levenez, klemm ha gouelan war he glac'harioù.
Gwir ene Breiz didarzet eo *Kroaz ar Vretoned*!

Blavez mat c'ez i eta ha bue hirbadus!
Blavez mat, ouspenn, da Vreuriez ar Brezoneg!
Da welo, ar bla-man, bugale Breiz o tont stank,
a vil-veru, enni!

F. E.

EUN ESKOP NEVE EN KEMPER

Setu eun eskop neve en Kemper hag eun eskop
breton. Bennoz Doue d'an Tad Santel ar Pab an
eus gret eun dibab ken mat, o rei da bastor ha da
dad da Vretoned Kemper unan ane, unan evelte.

An otro Duparc, person an Oriant, eo an Eskop
neve. Ganel eo en Oriant ar bla seiz ha hanter-
kant. Bean 'n eus eta bla ha hanter-kant.

E gerent a oa ginidik eus Pont-Skorff, eur
bourk etre an Oriant ha Kemperle, hag eno e oe
savet. Person ar barouz, o welet e spered lemm,
a gasas anean d'ar skol da gloerdi bilhan santez
Anna. Eno e tiskoueas e oa eunan spered ha kalon
mti 'vit ne gaver, peurvuian, etouez an dud
yaouank, ha pa oe bet beleget, e oe miret evit
bean mestr ha kelenner, d'e dro. Ar bla 1895, da
seiz vla ha tregont, e oe hanvet da berson en
Oriant.

Eno e oa chomet aboue, enoret ha karet gant ar
re vat, doujet hag enoret ive gant enebourien ar
religion.

Eur c'holl bras eo 'vit eskopti Gwened koll
anean, mes pebez eurvad ha pebez gouid evit
eskopti Kemper!

Ha gant ar bobl ha gant ar veleien, digemeret e
vo evel eun doue, ha pa vo klevet o komz gant
kement a nerz (rak bean eo eur prezeger dispar) ar
yez brezonek a anave koulz ha pep-hini, tridal a
rei ar c'halonou hag an holl a lavaro gant stad :
Ya, en gwione, eun Tad hou deus bet da
c'houarn ac'hanomp!

Bue hirr, yec'hed hag eurvad d'an Eskop neve
war gador zant Ksounrauntin. Doue hag holl zent
Breiz da rei harp ha sklêrijen d'ean!

N. B. — 'Benn ar zun-all e sonfemp gant ar
c'hloc'h bras, eur c'hloc'h-all en enor d'an otro
Duparc, eskob neve Kemper. Re divezat omp bet
'n em gavet ar zun-man.

BREURIEZ AR BREZONEG

N'eus ken nemet eur zult goude heman da
gas evit man « Kroaz ar Vretoned » da vu-
gale

Callac, a zo 12 ane ;
Keriti, a zo 31 ane ;
Kermaria-Sulard, a zo 43 ane ;
Plouagor, a zo 21 ane ;
Peurit-ar-Roc'h, a zo 16 ane ;

Diwar miz genver, ne vo kaset ken nemet d'ar
re a roo o hano hag o eiz real ar bla, 'vel ma oe
skrivet breman 'zo pemzek de, en *Kroaz ar Vre-
toned*, hag e hadskrivomp adarre aman warlerc'h.

Eur Vreuriez evit bugale Breiz

Adalek ar bla neve, *Breuriez ar Brezoneg*,
laket dindan skoazel ar Mabig Jezuz, ar Werc'hez
ha sant Ervoan, a zo krouet da vat en hon Bro evit
ar Vugale, aboue an oad a 9 bla betek an oad a
14 vla.

Petra da rei? — Nebout a dra!

An holl vugale hag a zo en oajou-ze eo digor
d'ar Vreuriez, gant ma paeoint bep bla 8 real
d'ar Vreuriez, 27, ball Charnier, Sant-Briek.

Petra da c'hounit? — Kalz a dreo ha kalz a vad

'Vit an 8 real-ze, ar bugel an evo,

DA GENTAN :

Kroaz ar Vretoned 'pad ar bla, kaset dre ar
post : da laret eo. *Kroaz ar Vretoned* vo roet
d'ar vugale 'vit hanter-briz, rak 16 real ar bla e
ve paeet.

D'AN EIL :

Ar vugale o devo 'vit man eur c'haier laket
warnan siel *Breuriez ar Brezoneg* hag o hano.

D'AN DREDE :

Bean 'devo, da skrivan war o c'haier ha da zeski
dre 'n envor, *penadour labour* a gavfoint eur
wech ar miz en o c'hazeten.

D'AR BEVARE :

Bean 'devo, eur wech ar bla, *prijou* herve al
labour o devo gret war o c'haier hag ar gouid o
devo gret war an deskamant brezonek.

D'AR BEMPVED :

Bean o devo *lod*, an eil war-lerc'h egile, en
kement tombola pe c'hoari-sac'h a rey *Breuriez
ar Brezoneg* er parouziou 'lec'h ma roo gouelioù.
Ar pez a c'hounefont gant ar bilhed kemeret evite
a vo kaset d'e.

D'AR C'HOUEC'HVED :

Ar Vreuriez, o vean dindan skoazel ar Mabig
Jezuz, ar Werc'hez Vari ha sant Ervoan, e vo
lavaret *ter oferenn ar bla*, unan da Nedeleg, eun
all da viz mae, 'mare gouel sant Ervoan, hag eun
all da viz est, e kerz gouel ar Werc'hez, *evit holl
vugale Breuriez ar Brezoneg* hag he madobe-
rourien.

Pedi 'reomp ar *vistri-skol vretan ha kristen
koulz a Leon 'vel a Dreger*, da lakat ar muian
ma hallfoint eus o bugale war roll *Breuriez ar
Brezoneg*. *Breuriez ar Brezoneg* a vezo eur
skoazel evit ar vistri ha mesthez skol, koulz
evel 'vit ar c'herent.

Pa vo dek bugel eus ar memez parouz, vo gret
enni eur gouel ar bla, d'an nebeutan. Ar parou-
ziou n'o devo ket dek bugel er Vreuriez vo kaset

d'e prijou eur wech ar bla, mes ne vo ket gret a
ouel.

N'eus forz pesort bugel eta ha n'eus forz eus
petore parouz a Dreger, a Gern pe a Leon, a hall
bean en *Breuriez ar Brezoneg* ha kaout lod er
goundou a zo stag outi, gant ma kaso hen, pe e
gerent, pe eur mignon, 8 real d'imp, hano ar
bugel, e oad hag e *chomaj*.

An hanoioù a vo digemeret en pep amzer, mes
gwelloc'h eo (hag ezetoc'h eo evidomp) 'vijent kaset
raktal, pe da vitanan, epad miz c'houevrier.

Renerien ar Vreuriez.

Digouet 'zo ganiomp ar zun-man eun toullad
mat a hanoioù bugale o tigas o arc'hant evit
Breuriez ar Brezoneg.

Trugare d'o c'herent ha d'o mistri!

Ra vo heuilhet o skouer gant kalz a re-all!

EUN DEN A GALON

Eur wech an amzer e ra vad dont endro war ar
pez a ve bet laret pe skrivet.

Evel m'emmellan kalz eus ar « politik milliget »,
e tigue d'in alies — evit sklerijenni ma lenne-
rien — distrei diou wech war ma fennad-skrid,
ha ze, evit bezañ reisoec'h pe evit heuil gwelloc'h a
ze ar pez a dremen. A dra zur, n'eo nag eur blijadur
nag eun ezamant ober politik ; red eo hen ober,
koulskoude, pegwir holl a c'houzavomp al le-
zennou, ha mat, ha fall.

N'eus ket nemet a amzer, em fennad « Man-
trerien ineoù » e komzen eus an urz kri a barze
ar beleg da dostaat d'ar vartoloded ha d'ar zou-
darded klanv en hospitalion, nemet hag ar glan-
vourien hen goulenche dre skrid, pe dre destou.

Evit rei d'am fennad-skrid muioch a bouez
c'hoaz, e kemeren evel skouer ar paourkez sou-
dard Drougè, marvet hep beleg en hospital Roan,
an deion kentan a viz du.

An urz-man a boante an holl. Ar gasoni a dle
tevel dirak ar maro ; dirak ar maro peb den a dle
douja, rak c'hoantaden eun den o vervel — pe vo
kristen pe ne vo ket — a zo eun dra zakr.

Evel m'an eus savet e vouez enep da laeron ar
c'houencheon, hou c'henvroad ha mignon mat, an
aotro Provost de Launay, a zavas ive e vouez
enep d'eun urz ken digaton.

Evit gwir, hini ebet gwelloc'h evitan n'halle
difenn liberte hon soudarded hag hon martoloded.
Chlaonet zoken gant e enebourien, o vezan m'eo
eun den reiz hag eon, komzou an otro de Launay
a zo bet digemeret mat e-barz ar Sened, daoust
d'an trouz ha da gasoni eur rum-tud diskiantet
ha klanvaet.

Aa aotro Chéron, eus a beurz Ministr ar brezel,
a brometas neuze rei urziou muioch frank da
renerien an hospitalion...

« N'eo ket hepken urziou frank a zo ezom,
eme an aotro de Launay, red mat eo d'al lezen-ze
bezañ chenchet peun-da-benn, petramant renerien
an hospitalion a droo hag a distroo an urziou
herve o c'hoant pe o c'hasoni, hag ar zoudarded
paour a vo hepred gwasket... »

Evit kuz torfejon ar Gouarnamant, an aotro Ché-
ron a laras gant eun hardiegezh ifern ne oa bet
biskoaz gwasket soudard, mes e felle, er c'hontrol,
plega ha douja da greden pep-hini...

« Kement rak-se, eme an aotro de Launay,
eo e c'hoantzan, c'hoaz eur wech, kavout, un
hepken urziou frank, mes eul lezen groet ha dia-
zeet mat, ma c'halle pep klavour mervel herve e

PEMPVED LIZER EUS NAONED

Brao e oa an amzer an de-all, ha me gant eur mignon d'ober eun tam baleaden war ribl al Loar.

Nag a dud, ma Doue! Nag a girri o vout hag o tout! Ezet eo gwelet pegen bras eo ar c'honverz er vro-man.

Setu ni dirak ar c'hastel bras. Pegen kaer eo ar c'hastel-ze savet gant hon duked koz. Pegen sklér e tiskouel galloud ha kaerder hon Bro Breiz, eu amzeriou gwechall!

— Eur wech-all, ec'h efomp en diabarz d'e welet, eme ma mignon; hirie, heuilhomp gant ar ster. Eur pec'hed e vije tremen hep bale eun devez evel heman, an heol o para evel pa vije arru an neve-amzer.

Mont a rejomp eun tam pelloc'h, o heuilh bepred ar ster vras, ha setu ni dirak eur blasen vihan war ribl ar ster. Ne oa etrezi ha ni nemet an hent-houarn a droc'h Naoned pen-da-ben o vont bepred a-hed al Loar.

— Petra zonzet-hu eus ar blasen-man? eme ma mignon.

— Fe, tra ebet! Na bras na bihan; tie loued en he zo, eun dachen marc'had en he c'hreiz; petra a dalvoudegez a welet aze?

— Kenvroad, eme ma mignon, ma vije ru-gwad ar mogerion tro-war-dro, ru-gwad ive ar pave a bleustromp, dereat a-walc'h e vije al liou ouz an darvoudou heuzus a c'hoarvezas aman.

Plasen ar Bouffay eo houman. Aman oe savet, en amzeriou koz, eur c'hastel krenv evit difen ar ger. Divezatoc'h, ar c'hastel a deus da vean eur prizou. Ennan 'oe dalc'het ar pevar denjentil breton, Pont-kalek hag e vignoned.

War al leur-man e oent merzeriet. Rak gwir verzerien e oent, o vervel evit Breiz, merzerien ar Wirione, al Lealded, ar Garante-vro.

Nag enebontien da Franz ne oant ket i, kennebent, p'eo gwir e oent lazat gant Dubois, an den milliget-ze, a werzas Frans d'ar Zaozon, a gasae Breiz, dre ma oa, evel ma vo da viken, gwellan skoazel ha fidelan mignon Frans. Pell oa Frans diouz miret ar gir touet gant he roue pa zimezas gant Anna, an dukez tud. Dubois ne glaske nemet gwaska hon zud, lakaat warne trujou neve savet hep aotreadur Stadou ar Vro. Neuze e savas ar gwellan Bretoned, hag en o fenn Pontkallek, holl kristenien eus an dibab, holl tud leal ha gwirion. Ha laret a rejont a voaez uhel:

— Kement-se n'e ket mat. N'eus en eur lizer-feurm nemet ar pezh 'zo skrivet warvan. Bezet tud d'ho kir evel ma 'z omp ni. Sinet ho peus eun emgleo; dalc'het d'al lezen en deus dooget roae Frans.

Sionas! ar paour kez Bretoned a oe tapet ha kondaonet d'ar maro gant barnerien paet. Mervel a rejont evel merzerien.

— Gret em eus ma dever; gret ho micher, e laras Pontkalek d'ar boureo. Skuilhet e oe e wad gwerch ha dinam, evel hini e gompagnoned.

Hogen, hervez ar pezh 'zo merket war levr Doue, ar gwad a c'haly ar gwad. Tri ugent vla goude, ar gwad a rede c'hoaz, a boulladou, war ar memes leur-ger.

Gwad breton ive, evit ar muian, gwad kristenien o vervel evit ar fe gristen, trouc'het o fennou gant ar c'hilhotin, pe beuzet er ster dre urz KARRIER, an den diaoulek a oe mestr Naoned epad an Dispac'h vras.

— Gwir eo kement-se, e laris d'am zro, ha Doue d'hon miro da welet troe evelse! Eun drue eo, koulskoude, n'eo ket bet miret an treo evel ma oant en amzer-ze. Karet am mije gwelet an tour elec'h oe dalc'het er prizou hon c'hevnoiz reuzendik. Pebez skouer vat! Kaerat deskadurez evit ar bobl! Ar C'hallaoued, hag a gomz bepred a liberte, a c'helle deski d'o bugale penos e varver evit difen gwirion ar bobl.

Ma mignon a loskas eur c'hoarzen ken e ti-zroas warzu ennan eun den a dremene ebou.

— Farsal a ret, emean, hen gont a ran. Goulet hepken gant an aotroze a zo bet ken estlammet gant ma c'hoarzen, hag-eo ar petra 'zo c'hoarveet aman? N'omp ket en Bro-Zaoz aman! Ahont, pep tra koz, pep moger, pep kastel, eur ween goz ive a zo miret gant evez; an dud-ze a zo leun a zou-

jans evit pep tra hag a gomz eus o c'hendadon. Karet a reont lenn war an treo-ze, evel war leorion dispar, envor labouriou o gouen, ha gant skouer ar re goz e teu d'e muioch a galon evit kregi gant an task merket d'e gant an aotro Doue.

Evelse eo e sonj hon breudeur Bro-Zaoz: Iverzoniz, Keumrüz, hag all.

Evelse eo red d'imp ober ive, ni, Bretoned, ma karomp beva. Ar C'hallaoued n'int ket eur bobl; eur bagad denved int i hepken, en amzer a vremen. Ne vont nemet evit an amzer a vremen, hep sonjal tam ebet en amzer dremenet, hag en amzer da zont, nebeutoc'h c'hoaz. Eun tamnik plijadur, eur gaozeaden bennak, eun tam politikaj lous, setu trawalc'h evit leunian o bue. Ni, Bretoned, 'zo bet ampoezonet gante, eun tamnik, mes o tihuni emamp, evit gwir. Chomet e oa an tan beo e kreiz al ludu, ha tud 'zo, kalonek ha yaouank, evit hen c'houeza. Prestik e savo ar flamm bras ha lugernus. Ha pep-hini a dommo outan.

Ha dioc'h ma diviz, ar C'hallaoued, evite da vezan ken rok, ni bello deski d'e meur a dra, ha rei d'e eur gentel fur ha pouezus bennak. Daoust hag i a intento ane?

— N'eus gwasoc'h bouzar evit an hini ne gar ket klevet, e laris d'am zro, 'neur giardi eus ma mignon, rak arru e oa divezat. Poent eo ive laret kenavo d'ac'h, kenvroiz, c'han d'ar zun-all.

GWELTAS.

AR C'HRISTEN

E Skol ar Skritur-Zakr hag ar Skiant vat 'warbenn

Ar gwir Iliz

Lavaret em eus er zizun-all ez eus war an douar eun Iliz fontet gant Jezuz-Krist, hag an Iliz-se eo an Iliz santel, Katolik, Apostolik ha Roman, renet hirio an de gant Pi X.

Setu ma teu ar Brotestanted da lavaret d'omp, hatoliket, e faziomp kalz, em ganto ha nan ganeomp-ni an Iliz a zo bet fontet gant Jezuz-Krist.

Respont a ran d'ezo: Ze n'eo ket gwir, ha ne c'hell beza.

E gwirionez, er broioù protestant n'e ket eun Iliz, mes meur a hini eo a zo, dre ma n'o deus ket holl ar memes kreden ha ne zentout ket ouz ar memes mestr. Beza 'zo anezo kant ha kant rum, dishenvel o c'hredennoù, ha, zoken, adversorien bras kenetrezo. N'em glever a reont war eur poent nemet ker: da ober brezel d'an Iliz Katolik. Ar rummoù protestanted-se ne c'hellont ket beza pep hini anezo ar gwir Iliz, pa 'z e gwir n'eus nemet eur gwir Iliz, *unan hepken!*

Jezuz-Krist, evit gwir, n'an eus ket lavaret: *Me a savo va ilizou*, mes lavaret an eus, avad: *Me a savo va Iliz*. N'eus eta, hervez komz hor Zalver, nemet eun Iliz gwirion; an ilizou-all a zo asambleoù, ilizou ar gaou. An dispac'herien hag ar franmasoned, renet gant spered Satan, enebour Jezuz-Krist, a oar mat e pelec'h em a ar gwir Iliz. Evel-se, e reont brezel, ar gwas ma c'hellont, d'an Iliz Katolik, d'he eskibien, d'he beleien, d'ar gristenien fidel, ha lezel a reont er brasa peoc'h, didrous kaer, an ilizou protes-tant.

Pa vo lavaret, lennerien, ar wirionez pen-da-ben, en holl asambleoù ar Brotestanted ne c'hell ket beza gant an holl ar memes kreden, an holl ne heuilhont ket ar memes kreden, ha, dre-ze ive, iliz ebet na zo ganto, na bihan, na bras. Penos an dra-ze? Abalamour zur ar Brotestanted a zo pep hini anezo libr, mestr da entant ar Skritur-Zakr evel ma kar, gant e benn e-unan. Rakrit, en o zouez, mestr ebet, emgleo ebet, iliz ebet!

Lavaret a ran ouспен penos ar gwir Iliz a de beza stag ouz Jezuz, he fondatour, evel gant eur chaden, hep ne vankfe mell ebet er chaden, hep ne ve bet morse ar chaden-ze torret, dre ma vezo Jezuz gant, eus an eil rum tud d'egile, betek fin ar bed. An Iliz Katolik a zo evel-se, evel m'en desk d'omp an istor eus an amzer dremenet.

Iliz ar Brotestanted, avad, (marteze an eus pec'hed o rei d'ez i hano a *iliz*; iskuzit ac'hanon, da vihana, dre n'ouzon ket peseurt hano-all rei d'ar vanden dud-se), iliz ar Brotestanted, eta, pe,

ma karit, *ilizou* ar Brotestanted n'ema ket evelse ar gont ganto. Penos 'ta? Ah! savet eo bet ilizou ar Brotestanted, n'eus ket c'hoaz eur seurt pell-amzer, gant eur manac'h eus an Alemañn, eus bro ar Brusianed, e hano Luther. Hema, leun a ourgouilh, evel Lusifer, tad ar gaou, en em zavas enep an Iliz Katolik, e vam, hag a stagas da brezek e relijion ar bloaz 1517, da lavaret eo, brema 'zo 390 vloaz. Relijion ar Brotestanted eta n'ez a ket betek Jezuz-Krist. Deuet eo war au douar 1517 vloaz war e lec'h; rak-ze, Jezuz-Krist n'eo ket bet ato ganti azalek ma prezegas an Aviel betek vrema. Eur relijion faoz eo eta neuze-sklear eo!

E pelec'h, Protestanted, e oa ho relijion arók Luther? Allas! ne oa hano ebet anezi. Pion neuze a grede eo bet fontet gant Jezuz-Krist?

Protestanted keiz, ho ministred a lavar gevier d'eoc'h! Deuit endro, daved an Iliz Katolik, ho mam; deuit daveli; ho kas a raio betek Jezuz, ha, drezan, e kavoc'h silvidigez d'hoch ene.

KATOLI.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Brezel ar Maroc. — Ar zun-all e tenas kelo eus ar Maroc da lavaret e oa bet hanvet Moulay-Hafid da « sultan » elec'h Abd-el-Aziz. Hogen, ni, betek breman, hon deus anaveet heman. Evelse en em gavomp etre ar morzol hag an ane. red d'imp dispign ar'chant ha tud gant Abd-el-Aziz a zisplij d'e zuzidi, peotramant digemer Moulay-Hafid, goude bean gret brezel d'ean.

Trist en em gav hon doare. Ar Gambr, ma raje he dever, a raje d'ar vinistred disklerien reiz petra emant en sonj d'ober er Maroc, kent lezel ane da vout pelloc'h.

Ne ket a-walc'h dispign kalz ar'chant d'ober netra; brevi tud a ve gret ha brevi al listri brezel a zo du-hont, endro da Gasablanca, muioch a vech d'e o harz ouz ar mor hag an avel evit ouz ar Marokaned.

Setu aman pennadoù eus eul lizer skrivet d'e dud gant eur martolod diwar lestr an *Nive*:

« Red eo d'in kontan d'ac'h, emean, tristat bue hon deus aman eur pennad 'zo.

An *Nive* a zo debret gant ar mor. Hon dilhad a oa chomet warni goude oamp deut war an *Desaix*: et int gant an toliou-mor; pemp ha tregont ejen ha kezek a oa reuket lezel warni; 'benn breman int maro.

Panevert n'eus troet an avel, e oamp kollet holl, tri c'hant den n'eun tól, soudarded ha martoloded. Ne gredemp ken na dibri nag evan gant aon ne vije red d'imp, eus an eil momet d'egile, n'em döl er mor.»

N'eus lestr ebet, herve ar martolod-man, a gement ne ve ket bet glac'harat gant an avel hag ar mor: ar *Galilée*, ar *Sabarcane*, ar *Dard*, ar *Forbin*, ar *Condé*, ar *Gloire*, an *Amiral-Aube*, ar *Shamrok*, ar *Mytho*, an *Desaix*, holl, nemet ar *Vinh-Long*, int bet gwall-gaset ken 'zo bec'h o terec'h daru ane war var an douar.

Ar martoloded a zo skwiz maro gant ar vue-ze, ken skwiz 'vel pa vijent bemde o vrezelli.

Kalz a hoan, kalz a goll, kalz a wap ive, setu petra an eus talvezet betek breman da Frans brezel ar Maroc.

Eul lac'hadeg bugale. — Ar zun-all en eur, ger a Vro-Zaoz, e oa et bugale da welet eur « guri-zite ». Kement a oa ane ha kement a rejont da n'em voutan, ma koejont eus lein eur vras ha ma oe lazat c'houezek ha gwall dappet-taou ha tregont. An hini kosan an evoa nao bla, hag an hini yaouankan pevar bla.

Ar « golistad » madober. — En iliz-veur Soissons 'zo kolisted hag a drec'h war ar re-all. Gant an de kentan 'r bla o deus bet, 'vel just, o d'ou mat. Setu int n'em glevet ha zavet, diwar o ar'chant, daou lur ha tregont. An de m'ac'h ejont da welet an Eskob, gant an de kentan 'r bla, e rejont ane d'ean « vit diner ar veleien. »

Ha gwelet 'zo bet biskozet kueroc'h?

Ar c'hemenerezed. — En Paris hag er c'hérierou bras e kaver kemenerezed eleiz ha na c'houeont ket o bue. Darn ane, goude labourat hed an de,

ne veint paeet nemet pemzek gwenneg, pevar real.

'N em glevet o deus breman ha goulennet ma vije paeet, d'an nebeutan, war ar meaz, pevar real ar c'hemererezed oajet a 18 vla; eiz real, d'an nebeutan, er c'hériou bras, ha c'houec'h real er c'hériou entre.

Ar seurezed ermeaz! — Ar zun-all eo bet chaset ar seurezed eus an « Hôtel-Dieu », hospital Paris. Biskoaz ne oa gwelet ken trist-all.

Eur mor a dud a oa wardro d'an ti. Pa oe deut an eur d'al leanezed da gwait, ar glanvourien a lampas da distagan kezek o gweturion. Peder gwech e oent hadstaget ha distaget. Bean oa tud hag a c'hourvezas dindan ar rojou. Unan ane a oe friket d'ean e c'harr.

Trizek kant vla 'zo oa Urz al Leanezed Augustined o c'houarn an « Hôtel-Dieu ». Ne oant ket bet argaset gant an Dispac'h vras.

Laouen bras eo kalon ar franmasoned. Gret o deus aman kaeran tol a hallent ober, tizet o deus war an dro leanezed, peorien, klanvourien, mignonned nesan an otro Doue.

Eun tad o tifenn ine e vogel. — En eur skol eus kichen Lectoure, er Chreizte, eur mestr-skol, eun « azen-gorniek », 'vel int bet hanvet gant eun akademisian, a lavare d'ar vugale fall war fall eus ar relijion, an arme, ar vro.

Eun tad o vean klevet gant e vogel, a deuas d'ar skol, ha, dirak ar vugale, e lavaras d'ar skolaer :

— « Kentan gwech, emean, e klevin po 'digoret ho keno da drouk-komz eus Doue dirak ma bugel, eo me ma-unan a roo d'ac'h ho kopr: Savet ho vugale 'vel e karfet, mes ma bugale me a zo d'in, hag e fell d'in veint savet d'am c'hiz! »

Aboue an de-ze, ar mestr-skol 'n eus gret eur skoulm war e deod.

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

KASTEL-PAOL. — Kanvou. — Dimerc'her eo bet beziet, e Kastel, an dimezel de Parceveaux, ganet e maner Trojoli, en Kleder, hag oajet a 44 bloaz. Er menez sizun eo bet sonet betek teir gwech an angoni eviti!

PONT-SKORF. — Pôtréd têt. — Disadorn, Salaün hag Andre, forcherien en koat Guélingant, a oa ét d'ober eun dro, pa arrijont gant Al Lan, eun hostiz hag a oa o troc'han koad evit eun emmenuzer.

O welet ar forcherien, Al Lan, n'ouzer perak, ec'h eas droug ennan hag a gomzas rust oute. Salaün, ken têt-all, a darc'haas gantan eun tol gant lost e fuzuilh. Al Lan a goneas; mes kerkent e savas adarre, ha, gant e vouc'hal, e tiskaras d'e dro ar forcher lizet en e benn.

Au treo n'ejont ket pelloc'h. N'eus bet gwall dapet hini ebet eus an daou den. Mes desket a vo d'e, eur wech-all, vean ket ken têt.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

BEAR. — Bugale dizonj. — Disadorn, Marcel Briand, eur potrig seiz vla, a yeas da droc'han kaol gant ar bilerez lann. E zorn a oe tapet gant ar c'honteliou ha troc'het d'ean tri viz.

GWENGAMP. — Maro. — Kelo hon deus bet e oa maro an Itron Guériu, marc'hadourez azi-eün d'ar blomen en Gwengamp. Ear beden a c'houlennomp eviti digant hou lennerien, rak bean oa ive unan eus leunerezed Kroaz ar Vretoned, hag he dorn a oa prest hepred da rei skoazel evit ar vad.

LANDREGER. — Bugale dianket. — Calennec, Pierre, oajet a 33 vla, a oa eur pennad 'zo tol-distol, aman ha du-hont, o klask e voed gant e zaou vugel, unan ane oajet a 7 vla hag egile tri bla.

Skwiz gant ar vicher, Calennec a loskaas e vugale o-unan penn en Landreger hag a yeas d'an Hayr-neve.

Panevert da dud madeleuz hag a roas repu d'an daou vugel paour, e vijent maro ermeaz gant ar riou hag an naon.

KERBORS. — Eun ti o tont e-traou. — Intanvez Rider hag he bugale a oa o chom, en

houk Kerbors, en eun ti arru koz. Eun nosvez eus ar zun divezan, goude o c'hoan, oant ét ermeaz. A-boan o devoa zerret an nor, ma torras an treust a oa o tereñel ar zolier hag e koueas an doub war leur an ti. An treust e-unan a boueze eur milier.

PEDERNEC. — Tàn-gwall. — En ti Jean Bouget, eus Pedernec, eo bet kroget an tân disul en eur berchennad plouz. Pomperien Pedernec a diredas hag a droc'has etre an tân hag al lojeiz. Devet oe koulskoude 25 milier blouz.

PLEUDEL. — Tàn-gwall. — An tân 'zo kroget diriou en ti Guillermo, eus Lanvieu.

Ar wreg, poan d'ei o 'n em domman 'n he gwele, he devoa tommet eur men da lakat ouz he zveid. An tân a grogas en dilhad gwele; mes ne oe ket pell o vean mouget.

PLISTIN. — Mision. — Eur mision vras a zo o paonez bean bet en Plistin. Digouet 'zo ganimp eur pennad kaer a labour war ze, mes re divezat 'vit bean lakat ar zun-man. 'Benn ar zun-all, hon lennerien o devo ar blijadur d'hen tanva aman.

SANT-BRIEK. — « Breiz ». — Disul diwean e oe badezet, en Sant-Briek, eul lestr d'an otro Gualès a Mezanbrun. Ar paeron e oa an otro Corfec, rener an *Electeur des Côtes-du-Nord*. Evel just, eur Breton seurt gant an otro Corfec n'halle rei d'e filhorez nemet eun hano breton. Ouspenez, etouez an hanoio breton e tibabas ar c'haeran : *Breiz*. « Breiz » e oe hanvet al lestr, eun hano hag a dougo chans d'ei, mar be bolante Doue. Gant an otro Corfec, ni a lavaro da *Vreiz* :

Breiz, lestr kaer, dre ar mor kas breman Hano hon Breiz karet, eur vro eus ar braoan, Dre holl, pa vi gwelet, da hano binniget A lako da dridall kalon ar Vretoned!

TREMEVEN. — Medalennet. — An otro Hel-liet, person Tremeven, anaveet mat 'vit e labourion war treo koz ar Vro, a zo bet hanvet ofiser akademie.

Evelse e weler, gwech ha gwech, ar gouarnamant o vedalenni leanezed, beleien, evit o zervijou kaer, hag an de warlerc'h, o kas an archerien da lakat ane ermeaz eus o zier.

Petra da zouljal eus treo evellen, hag eus eur gouarnamant evellen?

BRIZ-BREZONEG

Setu aman ar gwellan responchon hon deus bet digant hou lennerien, ha trugare d'e.

Er « respont-all eus Leon » e chom c'hoaz eur gir gallek pe daou.

Hou lennerien, p'o devo lennet an tri respont, a rey, int o-unan, o dibab 'vit ar gwella.

Setu aman, da gentau, ar pez a oa da zivankan :

Hennez ne oar ket an *nom* eus e zanzev.

Malheur en deus gant e loened.

N'am eus *konsolation* ebet gantan.

E zilhada n'int ket *propr*.

Du-man 'z eus tri *machin* da c'hriat.

Gret am eus teir *gabinet* em zi nevez.

Kavet am eus em plas *acomod*.

An *habitud* em eus da ober kement-se.

Me ho *supli* da zont d'am gwelet.

Obligation vat em eus d'eo'h.

Deut oun da *remersia* ac'hanoc'h.

Ne oar ket *parlant* c'hoaz.

Eur *gombat* rust a zo bet ganto.

Dies eo gouzout e *zantimant*.

Desir em eus d'e welet.

Me zo *hountant* da bartaji ganez.

Setu aze eun afer *important*.

An dra-ze en deus gret *impression* warnon.

Eun *accident* trist a zo c'hoarvezet gantan.

Diminui ra va arc'hant ganin.

En em *soumeti* a rankan.

Mont a ran da *gonsulti* unan bennak.

Calmet eo e darsien.

Hounevez 'zo karget a *vanite*.

Dioc'h ar c'henta *kalite*.

Respont eus Treger

Hennez na oar ket pegen hir eo e zanzev.

Koll war goll en deus gant e loened.

N'am eus plijadur ebet gantan.

E zilhada n'int ket kempen.

Du-man 'z eus tri venvek da c'hriat,

Pe : ter c'hrierez a c'hiz nevez.

Gret am eus ter gamprik em zi nevez.

Kavet am eus eur plas diouzin.

Douget on da ober kement-se.

Pe : an tech em eus d'ober kement-se.

Me ho ped da zont d'am gwelet.

Anaoudegez vat em eus d'eo'h.

Deut on da drugarekat ac'hanoc'h.

Pe : da laret bennoz-Doue d'eo'h.

Ne oar ket komz c'hoaz.

Eur stourmad rust a zo bet gante.

Dies eo gouzout e sonj.

C'hoant (mall) em eus d'e welet.

A galon vat e lodennin ganez.

Setu aze eun afer a dalvoudegez.

An dra-ze en deus skoet eur c'hlaouen em c'halon.

Eun darvoud (eur berz) trist a zo c'hoarvezet gantan.

Koac'han (bihanat) ra ma arc'hant ganin.

Plegan a rankan.

Mont a ran da c'houlen kuzul digant unan bennak.

Torret, troc'het, koueet eo e darsien.

Hounevez 'zo karget a stad.

Dioc'h ar c'henta danvez.

Job CHANTON.

Respont eus Leon

Setu aman ar gwella girion brezonek em eus kavet :

Hennez ne oar ket an *niver* eus e zanzev.

Gwall-er en deus gant e loened.

N'am eus *frealzidigez* ebet gantan.

E zilhada n'int ket *kempen*.

Du-man 'z eus tri *mekanik* da c'hriat.

Gret em eus teir *gambr* em zi nevez.

Kavet 'm eus eul *teac'h* dereat.

An *ahustumans* em eus da ober kement-se.

Me hoc'h *asped* da zont d'am gwelet.

Anaoudegez vat, 'm eus d'eo'h.

Deut oun d'ho *trugarekat*.

Ne oar ket komz c'hoaz.

Eun *emgann* rust 'zo bet gante.

Dies eo gouzout ar *pez a dremen en e spered*.

Reketi a ran e welet.

Gant *plijadur* e rannin ganeoc'h.

Setu aze eun afer a *dalvoudegez*.

An dra-ze en deus skoet eun tol em c'halon.

Eun darvoud trist 'zo c'hoarvezet gantan.

Bihanaat 'ra va arc'hant.

En em *renta* a rankan.

Mont a ran da c'houlen kuzul digant unan bennak.

Torret eo nerz e darsien.

Hounevez 'zo karget a *lorc'h*.

Dioc'h ar *gwella* danvez.

Mari LAVANANT.

Respont-all eus Leon

Setu aman ar frazennoù lakeat e brezonek mat :

Hennez ne oar ket an *niver* eus e zanzev.

Dichans en deus gant e loened.

N'am eus plijadur ebet gantan.

E zilhada n'int ket neat.

Du-man 'z eus tri *mekanik* da c'hriat.

Gret am eus teir gampr em zi nevez.

Kavet am eus eur plas eaz.

Ar voazamant em eus da ober kement-se.

Me ho *ped* da zont d'am gwelet.

Kontant oun ac'hanoc'h.

Deut oun da drugarekat ac'hanoc'h.

Ne oar ket kaozeal c'hoaz.

Eun brezel rust a zo bet ganto.

Dies eo gouzout petra a zo en e spered.

C'hoant em eus d'e welet.

Setu aze eun afer talvoudus.

An dra-ze en deus pouezet warnon.

Eur gwall eur a zo c'hoarvezet gantan.

Achui a ra va arc'hant ganen.

Plega a rankan.

Mont a ran da c'houlen kuzul digant unan bennak.

Torret eo e darsien.

Hounevez 'zo karget a ourgouil.

Dioc'h ar gwella danvez.

Anna-Louise POULIQUEN

graden... Sa breman abalamour da betra e c'houlennan an dra-ze :

Breman 'zo triwac'h miz, unan dimeus ma c'herent, al letanant Lautour, a oe lizet d'ar maro gant ar « grevisted ». Digaset e oe kerkent d'an hospital war dro 5 eur eus an noz ; da 4 eur eus ar mioutin e varvas hep bezan bet e anaoudegez.

Adalek ma oa en hospital, e vignoned a reas goulen eur beleg, rak anveout a rent an otro Lautour evit eur c'hristen direbech. Rener an hospital a difennas ouz ar beleg tostaat d'an den klavy, war zigare ne oa ket bet goulenet gant heman. (Penos en dije goulenet eur beleg, kollet gant an anaoudegez hag ar gomz ?)

Kaer en devoa dougen eur vedalen war e galon ; kaer o devoa e vignoned hag e genvreundeur testenia en doa an den kez komuniet an de a-raok, bepred ar beleg n'hallas ket tostaat.

Neuze eur mignon, mantret gant kement-all a grizder, a lakas digas eur falz-depech, en hano an itron Lautour. — « E dad, eme an depech, a c'houli eur beleg evitan ! » Evelse, eur beleg kristen a c'hallas absolvi ar c'hlanavour...

Mar hanvel urziou ar seurt-se urziou frank, c'hout, otro Chéron, eme an otro de Launay, u'hoc'h ket dies da gontanti...

Dirak eun testeni ken skler, dirak grevusted urziou ken kri ha, muioc'h c'hoaz, dirak nerz kalon an otro Provost de Launay — a fell d'ezan bepred difenn liberte an holl hag ar wirione bep damanti. — Chéron a brometas, en hano ar Gouarnamant, douja muioc'h da gredennon ar soudarded hag ar vartoloded, ha, diwar vremen, lezel muioc'h a frankiz gant ar veleien da dostaat ouz ar glanvourien.

Ra vo bolante Doue e ve gwir an dra-ze hag e talc'ho ar Gouarnamant d'e gomz... !

Siouaz ! ken kustum omp da glevet komzou flour ha melus, ken kustum omp da welet an oberou oc'h enebi ouz al lavariou... ma chomomp eun tammig amgred dirak komzou Chéron...

Bepred eo, u'hallomp nemed meuli ha trugarekaat an otro Provost de Launay.

Pa fell difenn ar Vro, pa fell souten gwirion ha harpa ar wirione, e kavomp anezan dalc'himad er peun kentan. Eun enor eo da Vreiz kavout eur Senedour eveltan ! N'en deus nemet eur zoursi : difenn e Vro ! N'hen deus nemet eur c'hoant : ober vad d'e genvroiz !

Gallout a reomp laret dioutan : Henez a zo eun den a galon !

AR YEODET.

PRIJOU NEDELEG

Pehini eo ar zant breton a garet ar muian, ha perak ?

Unan ha tregont respont hon deus bet d'ar goulen-man, digant bugale adalek eiz vla betek 13 vla. Leonnet hon deus ane holl hed-a-hed, ha gret an dibab eus ar re gentan, gwellañ m'hon deus gallet.

Setu aman, dre renk, hanoioù ar vugale hag o chomaj. Ma ve unan bennak hag e ve laket d'ean eur chomaj fall, hen pedomp da rei kelo d'imp, arók kas d'ean pe an arc'hant pe al levrig a vo digouezet gantan.

Ar prijou a zo evellen :

Priz kentan : 20 real en arc'hant hag eul levr brezonek.

Eil priz : 1 skoed en arc'hant hag eul levr brezonek.

Trede priz : 8 real en arc'hant hag eul levr brezonek.

Setu aman breman roll ar vugale a zo aet al lore gante :

Priz kentan : François Croguennec, eus Loc-Eguiner, 29 poent.

Eil priz : Franceza Nohaic, eus skol gristen Carnoet, 28.

Trede priz : Mari-Anna Goupil, eus skol gristen Carnoet, 27.

Kentan accessit : François Callec, eus Sant-Urbain, 26.

Eil — Joséphine Raoult, eus Plouagor.

Marie Rebours, eus Plouagor, 24.

Trede — Léonie Henry, eus skol an ti glas, Peurit.

Louisa Bosquet, eus skol an ti glas, Peurit.

Anna Peithon, eus Kermaria-Salaud, 23.

Pevare — Thérèse Trébéden, eus skol an ti glas, Peurit.

Joseph Jouan, eus Sant-Jili-Plijeaux, 21.

Pempved — Mari-Thérèse Abgrall, eus skol Kerdouglas, Lanurvan, 20.

Chouec'hved — Françoise Baron, eus skol Kerdouglas, Lanurvan.

Seizved — Maria Potin, eus Peurit.

Eizved — Rosalie Manchec.

Naoved — Emilia Lucia, eus Peurit.

Anna Perrot, eus Peurit.

Mari-Joseph Abgrall, eus Lanurvan.

Dekved — Maria Trémel, eus Peurit.

Marie-Françoise Toullec, Joseph Thomas, eus Keriti.

Unnekved — Mari-Joseph Coadou, eus Peurit.

Daouzekved — Cécilien Masson, eus Keriti.

Trizekved — Amélie Le Gras, eus Keriti.

Pevarzekved — Joséphine Le Bot, eus Lanurvan.

Pemzekved — Victorine Cathou, eus Peurit.

Chouezekved — Alexandrine Lucia, eus Peurit.

Maria Piriou, eus Peurit.

Véronique Buzulier, eus Peurit.

Joséphine Kervella, eus Lanurvan.

Seitekved — Anne-Marie Ollivier, eus Peurit.

Ken dibot eo an dra-man c'hoaz, bugale o lenn hag o skrivan brezoneg, ma renkomp lakat aman o hanoioù oll, n'e ket dre m'o deus gret oll labourion dispar, ze denio tam ha tam, mes abalamour ma vo gwezet evit piou eo ar gir a skrivan aman : Enor d'ar vugale a volante vat !

Koulskoude, kaset e vo da bep-hini eun draig bennak, nemet e fello da bep-hini eus an 31 bugel-man dere'hel da lenn ha da skrivan brezoneg.

Trugare d'an tadou, d'ar mammou, d'ar mestrou ha mestrezek-skol hag a labour gant kement a evez hag a furnez da lakat o bugale war hent ar Vro, an hent mat, an hent gwellañ !

'Vit ober gwelloc'h c'hoaz, kasoint d'imp breman hanoioù ar vugale-man evit Breuriez ar Brezoneg.

Lod eus al labourion kurunet a vo moulet war Groaz ar Vretoned : eun dibab vo gret etouez ar re-all. Siaget vo oute alioù, kelennadurez 'vit skrivan reiz.

TRUGARE

Eul lenner eus Sant-Brieg a skriv d'imp :

« M eus ket amzer, emean, da skrivan d'ac'h en brezoneg, rak red ve d'in dibab ma girioù. Ha koulskoude, c'hoant am eus d'ho trugarekaat, c'houi hag an dimezel vadelezeus he deus kaset d'ac'h sou an « Durzunel. »

Pa oac'h deut d'am gwicet eun dro bennak gant an otro Vallée ha Taldir am oa kanet d'ac'h ar poz kentan, mes ankouezet am oa ar peur-rest. Breman setu me ar zôu d'in pen-da-ben.

Trugare eta d'an dimezel ; trugare d'Ar Yeodet.

Jan-Mari BEGUEC.

SON NEVE

War eun ton anaveet.

Pep a votou koat nevez da verc'hed Treguignec, Da verc'hed Treguignec, 'Zo mat da dougen bezin eus a enez Sicc.

DISKAN

Irei tralonla, deridelontalei,
Irei tralonla, deridelontalei.

Da verc'hed Pouldouran pep a golineten,
Pep a golineten,
Hag a dap d'e da breman gant klochedon melen.

Ha da verc'hed Pleuvian pep a « belesinen »,
Pep a « belesinen »,
A vo mat da vale gant o amourouzien.

Pep a « gotillon » doskan na da verc'hed Pleuveur,
Na da verc'hed Pleuveur,
Mat da lakat alies, pa n'o deus ket nemeur.

Pep a « gravaten » nevez na da verc'hed Sant-Ke,
Na da verc'hed Sant-Ke,
Ar re-ze 'so izelloc'h eun tam o « c'halite ».

Na da verc'hed Priel, pep a goef lien moan,
Pep a goef lien moan,
A zo mat d'e da vale 'tre o lein hag o c'hoan.

Na da verc'hed Pervenat, pep a vouchouer gwenn,
Pep a vouchouer gwenn,
Pep a vedalen arc'hant da lakat 'n o c'herc'hen.

Na da verc'hed Plouvouskan, pep a goef tul brodet,
Pep a goef tul brodet,
'Re-ze 'brizout ket hale gant ar « haizanted » ;

Nemet gant martoloded, pôtreo o rubano,
Pôtreo o rubano,
Ha koulskoude ar re-ze ar c'hentan o zromplo.

Setu me retou d'ar gêr, achu ganin ma zôn,
Achu ganin ma zôn,
Ha gret peb a bez dilhad da verc'hed ma c'hanton ;
Ha gret peb a bez dilhad da verc'hed ma c'hanton,
Da verc'hed ma c'hanton,
Evit o dishenvalout eus merc'hed Lannou.

Nep an eus c'hoant da glevet piou an eus he zavet,
Piou an eus he zavet,
'Ac'h eo eur « chauffeur » yaouank ha nan eo ket [oc'h]et.

Breman 'ran ma ermitaj 'bars en bord ar « Pro-
'Bars en bord ar Provans, [vans],
Da gas ar veajourien etre New-York ha Frans.

Ha pa ven-me er gêr, 'ven 'chom en Koat-Bilez,
'Ven 'chom en Koat-Bilez,
Ha ma dousig koant a zo o chom en Sileder.

L...

GOULENNIT

E Ti-Mouleriez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Arc'hel katolik, gant an otroù abad BILLOU, gouenn Marton ha skeudennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegon war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gweneg.
Hent ar Groaz.....	3 gweneg.
Buc sant Anton a Babou.....	5 —
Pedennoùgou ha kelennadurez d'ar vugale.....	2 —
Merc'herenti an Tad Perbaar.....	1 —
Buc an Tad Perbaar.....	1 —
Al lez.....	1 —
Meulodi al labourer.....	1 —
Gweez sant Mith.....	1 —
Gweez sant Koneri (skudennel).....	1 —
An diadoul-paotr.....	1 —
Kin an Islanded. Kenloc'h mervet. Peden ar vartoloded. Gweez sant Kemo, hag all.....	1 — daou erit.

E wennun diskar ar priz evit meur a hini.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieg. — Imprimerie Saint Guillaume.

KROAZ ar VRETONED

KOUMANAC'HOE

KEMEREREN

KEMERNOU-KONVERZ

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar bloaz estren hag evit ar Broñ-helich.

E. AR MOAL, (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

An Aotrou Toussaint, 27, R. Ch. Charrier, 4 zigemer-ano.

Ar brezoneg hag ar feiz.
A zo beuz ha c'hoaz en Breiz.
Feiz ar Bro.
Gant brezoneg eo deuz ar feiz.
Gant ar mab-koad ha yezh.
Feiz ar Bro.

Dalc'hit leoned ! Ho brezoneg
Yezh an dud vad ha kalonek.
Yezh ar feiz ha yezh ar feiz.
Gouez ar Yezh, e ve pe he di.
Muz.

Aluzennou 'vit « Breuniez ar Brezoneg »

Eur mignon, eus Gwengamp. 20 real.
Eur mignon-sall, eus Gwengamp. 1 skoad.

AR " PAYS BRETON "

Moulet eo an niveren gwan eus ar Pays breton, kuzeten savet, evel hon doa lavaret, gant hon mignoned Herrien ha Mellac, evit Breiz-Izel, Breiz-Tramor ha Bretoned ar broñ-helich.

Ar Pays breton an eus c'hoant eta da skoulman gant ar memes chaden karantezus sperejon an Loll Gallied, forz pelloc'h e vijed.

C'hoant an eus da dastum ana kenver-ouz-kenver evit ober d'e 'n em anaveout, hag evit sikour ana d'anveout o Bro.

Setu perak e vo kavet ar Pays breton, brezoneg e sichen ar galleg, ha brezoneg eus a bep korn a Vreiz.

Gant kalz a garante, Kroaz ar Vretoned a zigemer en he c'hicher ar Pays breton. Evuris e vije ma hallje tennan outi daoubeged he lennerien, peo gwir he meuz a zo ive labourat, hep spont na miz, evit Doue ha Breiz.

Vit kounnanti d'ar Pays breton, skrivin d'ar renerien, 69, rue de Morbihan, Lorient, ha kas 14 real.

EUR C'HELO A LEVENEZ

Aboue m'eo krouet, izili kevredigez broadus Breiz (Union regionaliste bretonne) n'o deus bet nemet eur c'hoant : hadsevel Breiz en he spered gwechall ha miret o bro d'ar Vretoned.

Evel ma lar kenkouz ma c'henvreur Dir-Na-Dor : gwrien heb gwellan eo hon spered, hon yezh hag hon gizioù. Neiz hon Bro eta a zo oc'h heuilh hag o kemer skouer diwar an histor hag an amzer dremenet.

N'hallomp ket miret Spered hon Bro nemet ha heuilh a rafemp ar rouden goz. Ar rouden goz, hepken, eo an hent gwirion ; rak ar rouden goz he deus eviti anaoudegez, labour, skiant-prena hon c'hendadog, hag, en tu-hout, testen galloudus ar c'hantvejon.

Ar rouden goz hepken eo ar Roc'h war behini e vo diazeet hadsavoredigez Breiz.

N'eo ket eta hep digare e teu bep bla Kevredigez Breiz da bedi ar Vretoned da chom dalc'hiad doujus d'ar c'hizioù koz, da bedi ane da glask en pep lec'h kentelioù an istor, evit chom, d'o zro, ha dre eno, Bretoned rik, dishual, digabestr hag evurus ; rak ar Breizad na gemer ket eus Spered e Vro, ar Breizad na gemer ket skouer diwar ar Spered-ze, a zo eun den diwriennet, en e vro zoken. Kollet en deus ar sklerijen, ha, na distroo war e giz : an den kez-ze a glasko hepred en aner hent ar peuc'h hag an evurusted. . .

Pell amzer 'zo eman Kevredigez Breiz o son ar c'hloc'h ! He galvaden a zo bet klevet ha digemeret mat gant kalz a Vretoned. Pell amzer 'zo eman o labourat ar park ; temzet ha hadet he deus anezan, ha, hirie, a drugare Doue, eo krog da eostli freuz he labour hag he foan.

Mennoziou Kevredigez Breiz a zo bet chilaouet ; mouezioù bugale vihan zent Breiz a zo bet klevet. . . Hon Tad Santel ar Pab an eus teurvezet

digemer hon faden ha rei d'imp hon goulenn. . .
Doue ha zent hon Bro da vezan moulet !!

Ar gwellan stum, en gwirione, da viet Breiz d'ar Vretoned eo kalz war kadoriou sant Briek, sant Tual, sant Pab, sant Pateru, sant Kaourantio, eskibien vretou, tad gant, maget ha savet en Breiz. Evelse : an holl a zo evurus : an eskibien, da gentan, oc'h implia o galloud, o zautelez, o buc, d'ober vad d'o c'henvreuz ; ar Vretoned, gonde, o wlet behien o Bro o tant da vezan eskibien Breiz hag o klevet ane o prezek d'e en Brezoneg.

Goude gwelet hon arc'hiskob santel, an aotro Dubourg ken kaset, en penn arc'hiskopi Roue : an aotro Morelle, eskop Sant-Briek o kemer eun diviz brezonek : an aotro Gouraud, eskop Gwened, mignon bras ar Vretoned ha difenser ar Brezoneg. . . N'eo ket eun levedeg vihan d'ar Vretoned gwelet an Tad Santel P. X, oc'h henvel war gador sant Kaourantio, eskopi Kemper ha Leon, an aotro Duparc, person kalonek an Oriant ha Breizad penn-kil-ha-troad.

O klevet ar c'helou, e savas, eus an eil penn a Vreiz d'egile, eur voubouen a levenez, hag eus kalou heb Breizad e tec'has eur beden a obregre, eur beden, a anaoudegez vat, en keuver Tad kaset ar Gristenion. . .

Peadra a da !

An aotro Duparc, eskob neve Leon, evel an aotro Dubourg, a zo gant en Breiz ; gant eo eun Oriant, hag, evel pep Breizad, e tiskas e bedennou en Brezoneg war vaden eur vam gristen. Hini ebet, gwelloc'h evitan, o'halle bezan eskop Leon !

Da vihan, pa des'ho ermez e Eskopi, e c'hallo, evel sant Pol, sant Erwan, sant Weltas, komz brezoneg d'e Vretoned kaset, ha mont war-oc'h da galon pep-hini. . . Adalek ma tec'ho, e vo douget gant ar bobl !

En lano lennerien Kroaz ar Vretoned e kasomp d'ezan hon gwellan goude-hemennou a zoujans hag a garante gristen.

Ra vevo pell 'n hon zouez, ma tevio c'hoaz Breiz da vezan douar ar zent, ha ma vleudio euni ar peuc'h, ar furoez hag ar Garante !

AR YEODET.

Goude-Skriz. — N'eus droug abet a genoent na servij d'eur vad bennak. Lezen an Dispartit, o listaga an Iiz diouz ar Gouarnamant, a lez pep frankiz gant an Tad Santel da henvel e Eskibien evel m'en deus c'hoant. Evelse ive, an Eskibien a zo digabestr.

A. Y.

N. B. — An otro Duparc a vo sakret eskob en iliz Santez-Anna-Wened. Ar gouel her-ze a vo pe ar 25 a viz c'houevrer pe ar 7 a viz meurs.

AN OTRO DUPARC

Eskob Kemper

ha « Kroaz ar Vretoned »

Da respont d'ar penad hon doa laket ar zuntall evit rei kelou e oa hauret da eskob en Kemper, an otro Duparc an eus bet ar vadelez vras da gas eur gir a drugare da Groaz ar Vretoned.

Intent mat a ra, emean, brezoneg Gwened, hag eman e sonj e c'hallo ive, hep dale pell, komz brezoneg Leon.

Evit ma tevio e dol da vat gantan, e c'houl diganimp kas eur beden evitan da Zoue.

O ya ! Evurus e vefomp holl, n'e ket gwir, lennerien ger Kroaz ar Vretoned, o pedi beure ha noz an otro Doue ha sent Breiz da rei d'an otro Duparc ar pep gwellan eus grasou an ne, e zell a vad Breiz-Izel.

Gant an otro Dubourg eo dizroet ar Brezoneg d'ar gér ; mes chomet e oa c'hoaz war an trejoun ; gant an otro Duparc eo dent ar Brezoneg en ti-Pobez levenez evit an holl, bilan ha bras.

Bihan ha bras, koulz a Zent-Briek 'vel a Gemper hag a Weust, pehimp eta evit an otro Duparc, o Gab ha kinnad ar c'helou mat.

BREURIEZ AR BREZONEG

Hez a gazeten 'vit nestr ! — Mousz ar vagale !

Setu aman, betek hep, ar paronjian o deus bugale en Breuniez ar Brezoneg, paet gante hep a 8 real.

- Pennit ar Roc'h, 23.
- Garnot, 12.
- Goudeho, 1.
- Kermaria-Sabad, 17.
- Loc Egallier (Kemper), 2.
- Phinagor, 4.
- Yezh, 1.
- Plougouvez, 1.
- Pleunvez, 1.

Mes kant dek ha pevar-ugent parouz vretou a zo en eskopi Sant-Briek ! . . .

Setu aman o 9 ane, ha c'hoaz n'eus ket 10 bugel eus pep-hini !

Diwar ar zult-man na vo ken kaset a gazetennoù 'vit man d'ar vagale, nemet ar pez a vo ezom 'vit dantez ar goul heulou er paronjian n'o deus ket bet a oueliou, da laret eo, 'vit deski d'ar vagale leun.

Breman eta, bugale, komzet eyellen ouz ho tad hag ho man :

« Ma zad, ma mam, roet 'peus d'in an hano a Vreton : c'hoant ho peus, ha ne 'n eus c'hoant ive, da viet an hano-ze gwerch 'n em c'hulon. Mes c'houl n'ho pe ket amzer, peurevian, da rei kentelioù d'in war ar pez eo bean Breton mat, da laret eo, karout e vro hag hec'h relijion, ar relijion gatolik.

Er sholioù ne ve hen komzet nag a Zoue nag a Vro, nemet evit o gwapat hag o labean. Ha koulshoude, peus e karin-me ac'hanoec'h, ma zad, ma mam, ma ne garan ket na Bro hag ho Fe ?

Ma, setu aman eur Vreuniez hag e fell d'ei deski d'ar vagale an dra-ze, bean gwir Vretoned, o chom stag ouz yezh, kizioù ha Fe o zadou.

Ar Vreuniez-ze na c'houlou diganimp nemet 8 real ar bla hag a ginnig d'imp eleiz a dreo vat.

Peta eo eiz real, ma zad ? Pev ar bakad butun hag a dec'h eus ho korn en mozd, hep ober vad na d'ac'h na d'ho ti na d'ho pugale vihan. Ma, gant priz pevar bakad butun hepken, c'houl a ball ober eun eurvad 'vit hon Fe, evit hon Bro Breiz-Izel, evidomp hag evidoc'h hoc'h-unan.

Eur c'hornedeg pe daou nebutoc'h a refet, ha d'ar zult da noz, ni a lenno d'ac'h brezoneg d'ho tiduan ; bemde ni a garo ac'hanoec'h muioc'h dre ma sikouret ac'hanomp da garout muioc'h hon Bro hag ho Fe ; bemde ni a gresko ganimp ar skiant hag ar furez, o vean war an hent mat, hag o teski bemde eun dra bennak vat a neve.

Lezet ac'hanomp eta da gas hon hanoù da Vreuniez ar Brezoneg. »

Me gred, o klevet komzou ken far, ne vo na tad na mam ebet hag o devo ar galon da lavaret d'o bugale vihan : Nan ! ne gasfet ket ho hanoù da Vreuniez ar Brezoneg !

Ha neuze, chilaouet, eun dra hon deus c'hoaz da lavaret d'e :

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

REMERKIOEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑOUC-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Châner, a zigemer arzo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GELZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekizad a Vreiz.
FURNEZ AN GELZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,
Goupen ar Vez, e ve Pec'he d'
MILIN.

LENN

war ar

« GROAZ » peder pajen

AL LIN EN BRO-DREGER
BUE SENT BREIZ

Aluzennoù 'vit « Breuriez ar Brezoneg »

An otro Corvez, Bear. 10 real.
Unan hag e plij d'ei klevet lenn
Kroaz ar Vretoned. 4 real.

ALUZENNOU "KROAZ AR VRETONED"

An aotrou abad Leon, mestr kelenner e Kemper. 20 real.

An zotroun abad Leon a oa warlene e Kemper e penn *Breuriez Breiz*, eur bodad kloer yaouank, a studie war ar brezoneg er c'hloardi, o kemeret diwar o amzer-ehan eun nebeut heurioù pep zizun da lenn, da gana ha da skriva ar brezoneg ha d'en em brienti da veza gwir brezegeerien ha barzed vrezad, evel hon zent-koz gwechall. Enor d'ezo ! E-touez he holl lennerien, *Kroaz ar Vretoned* n'he doa ket gwelloc'h mignoned eget kloer *Breuriez Breiz Kemper*, hag an aotrou abad Leon, daoust d'ezan da veza breman gwall-dalc'het gant e stad nevez a vestr-kelenner, a fell d'ezan diskouez ne ankoua ket hon *C'hroazig*. Trugare d'ezan ! A-unan gant e lizer mat e tigoueze d'imp eul lizer-all gant rener nevez *Breuriez Breiz*, a zo chomet a zav a-greiz kalz a enkreze hag a drubuilh. Hon gwella mennozh d'ezha ra vo ganti skoazel hon zent Breiz-Izel ! Setu aman eur pennad eus lizer an aotrou abad Pennarun, ar rener nevez, o tiskouez nag a diesderioù he deus kavet ar Vreuriez war he hent :

Aotrou ha kenvroad ker,

Evel ma ouzoc'h, eur gwall-varrad a zo bet dirollet warnomp warlene ; taolet omp bet ermeaz eus hon ti ha strevet pell e peb korn eus an eskopti araok kaout goudor da gander'chel gant hon stedi e Lambézellek. *Breuriez Breiz* he deus bet kalz poan oc'h adsevel goude eun hevelep dismantr ; n'hor boa mui kastel Kerfoenneg evit en em voda ; er c'hloardi ez oa diez-bras kaout leac'h hag amzer da studia ar Brezoneg. Koulskoude eun intron vad o veza aotreet ez afemp bep yaou d'he c'hastel, e Keraudren, eno, en eur c'hardi, en em zalc'h paotred ar Brezoneg.

Breuriez Breiz a-bez a ra d'eooc'h he goure'hemennou hag a ginnig d'eooc'h he gwella mennoziou.

G. PENNARUN,
avieler.

BREURIEZ AR BREZONEG

Bugale o deus roet o hanoioù hag o eiz real evit bean en *Breuriez ar Brezoneg*, aboue an 20 a viz genver : Naontek ha pevar-ugent. Arru omp gant ar c'hant.

Breman, an hini e tigoueze e hano ganimp d'achui ar c'hant vo kaset d'ean (pe d'ei) **BUE SANT ERVOAN** 'vit man.

DIGOROMP HON DAULAGAD !

Ar bobl a zo mestr, hag etre daouarn ar bobl eman gouarnamant ar Vro. Setu an diskan a glever bemde entouez an dud.

Ya, a dra zur, ar bobl a zo mestr. Aon bras am eus koulskoude e ve ar bobl-ze henvel ouz eun tiad bugale diskiant a gas, eur wech an amzer, o zad da stoupa hag a c'houarn goude an tiegez gant kement a boell, ma weler hepdale ar staj o vont da benn ar c'hoc'hu...

Sed aze, en eun nebeut komzou berr, petra eo Gouarnamant ar bobl, pe gouarnamant ar bugel a fell d'ezan ober lezen d'e dad.

Laret am eus gouarnamant ar bugel... En gwirione, ar bobl a zo eur bugel bras, eur bugel dall ha n'eo ket, c'hoaz eur wech, muioc'h gouest da ren eur vro evit n'eo eur bugel da c'houarn ti e dad.

Eur bugel n'an eus ket skiant-prena a-walc'h da ren netra, eur bobl ive n'an eus na diskadurez, nag anaoudegez a-walc'h da c'houzout petra a fell evit gouarn ar vro.

Eus eun tu-all, en e furnez vras. Doue an eus roet eul lezen da bep tra er Grouadlez, ha netra ebet n'hall trei diwar e lezen, na tec'hel diouz e rouden hep nozout ouz al labour a-bez. Mar 'man kont evelse-gant traon ar bed, gwasoc'h c'hoaz eo al lezen roet d'an dud gant ar C'harouer ; rak an dud ne diut tam evel nerzion ar bed : an heol, al loar, ar stered, an dour, an tan, an amzerioù, hag all, traou ha na cheuchout ket hag a heuilh dalc'h-mad al lezen roet d'e. An dud o deus skiant hag a c'hall dibab etre ar vad hag ar fall, ar furnez pe ar zotoni.

Herve ma refont e kavfont, pe evurusted pe displijadur.

Dre-ze, en e vadelez divuzul, ar C'harouer an eus laket e lec'h da bep-hini, ha roet da bep-hini ar skiant, an anaoudegez a fell evit derc'hel e lec'h evel m'eo dleet. D'ar mestr en deus roet gallowd ha furnez da c'hourc'hemenni ha da c'houarn ; d'ar mevel en deus roet donjanz da zenti... Hag evel-se, eus gallowd ar mestr ha doujanz ar mevel eo e teu an urz pehini a vag ar peuc'h, rak hep ar peuc'h tiegez abed n'hall beva. A-benn ma chom eun tiegez en e sav eo red d'ezan bezan diazeet war gallowd ar mestr, da behini e touj an holl, bugale ha mevelien.

En peb lec'h eta eo red kavont eur mestr, en peun an tiegez kenkoulz hag en peun ar vro ; rak, ma n'hall ket eun tiegez kerzet hep eur penn, nebeutoc'h c'hoaz e c'hall eur vro kerzet hep eur Mestr.

Petra 'zo kiriek e ren hirie an dizurz hag ar Fall dre hon Bro ? En toue, ne c'houlomp ken senti da vestr ebet ! Ne fell ken na Doue, na Diaoul, eme diviz hudur ar Franmasoned. Ni a heuilh an ali-ze, ha hirie n'anavezomp Mestr ebet !

Ar bobl a zo mestr, a larer... N'eo ket. Ar bobl a-zo mevel, ha mevel dindan ar gwasan eus ar mestrou, mevel diindan tud ha na glaskont nemet karga o c'hof hag o godellou diwar e goust ha diwar goust e vugale.

En amzer gentan, pep Bro he devoa eur mestr, eur mestr hag a gemere e c'hallowd diwar gallowd Doue e-unan. Pep den a zente ouz ar mestr, pe Roue pe Impalaer e vije. Ar Roue, an Impalaer a glasse, da gentan, mad ar bobl ; o filjadur e oa gwelet ar bobl evurus ha dinec'h.

Breman n'eus na Roue, nag impalaer. Ar bobl n'eo ket evurusoc'h, pell ac'hane. E-lec'h bezan renet gant unan, ar bobl a zo renet gant kant ha

mil a dud. Ar c'hant pe ar mil a dud-ze a zo hanvet gant milionou a dud-all, milionou a dud hag a fell d'e, da gentan. — N'eo ket kavout eur mestr a-zevri, — mes lakat o gwarizi, o c'hasoni, o diskiantach da drec'hi war garante hag anaoudegez eun nebeudig, a fellfe d'e urz ha peuc'h.

Evel m'eo ar bobl hep anaoudegez, alies hep diskadurez, ha na intent ali mat ebet ; evel m'eo diez-daonet rei da gredi da bep-hini eo dleet kavout urz, da laret eo, kavout unan fur da c'hourc'hemenni ar re-all ; evel m'eman ar chas-klanv, a vev diwar hon c'houst en eur denna ouzimp o zeod gwaper, o vouta, o chacha Per ha Jakez, e welomp dustu pegeñ diez eo gant tud ken dis-henvel ha ken digomponez, ha na doujont da betra, kavout er vro an disteran urz vat. Ar peñ an em gav eo, an neb a dle senti eo a c'hourc'hemenn, hag ar bed a zo daoubennet. Lakat a reomp ar c'har a-raok ar c'hezeg !

Daoust n'an eus peñ ebet er Vro, en-touez an dud a c'hoanta ren, ez eus tud hag a zo koulskoude galvet ha donezonet a-walc'h evit bezan mestrou.

D'imp eta da c'houzout dibab ané.

Pegwir an amzerioù vremen a lak beuvion etre hon daouarn, ne reomp ket gant ar beuvion-ze evel ar bugel a droc'h e c'houg gant ar gontel a ro e vam d'ezan evit dibri e vara. Lakomp start en hon feñ peñs hon mouezioù n'int ket da veza marchalacet.

Ar votadeg a zo eun dra zakr hag a ro d'imp eun dlead striz.

Bezan hon deus dirakomp daou rum-tud : eur rum hag a gar an urz vat, eur rum-all ha na garont nemet dizurz ha trubuilh ; na reont forz petra d'ober gant ma c'hallfont gwapaat ar bobl ha beva, c'hoaz eur wech, diwar c'houezen e dal.

Hep urz n'eus ket a beuc'h, hep peuc'h n'eus nemet dibennach. Roomp hon mouezioù d'ar rum kentan, d'ar re a gar ar peuc'h hag an urz. Evelse, da vihan, e vo gwir vestrou da c'hourc'hemenni ha tud a galon da zenti, tud na glaskfont nag ar c'hant, nag enorion, mes tud hag a boanio, noz ha de, evit pinvidigez o Bro ha mad o c'henvroiz.

Digoromp eta hon daoulagad ; votomp gant poell ha gant furnez... E-lec'h bezan bugale dizent, bezomp gwir skoazellerien hon Bro... N'hon devo ket a geuz...

AR YEODET.

BLAVEZ MAT !

Ar « blavez mat »-man a deu abeours eur Breton yaouank eus ar Merzer, oc'h ober e servij en Luneville.

Seul-pelloc'h e ver diouti, seul-nesoc'h e ve d'ar galon karante ar Vro. Hon leunerien a lenno gant plijadur ar zalud-man leun a deneridigez kaset d'e Vreiz, eus a bell-bro, gant eur zoudard.

Blavez mat d'it, ma bro, ma Breiz-Izel garet, Bro ar feiz grenv atao, douar al leaded, Keit ma paro an heol war beg da venezioù, Keit ma tevio ar mor da ruilh e wagennoù War da aod tro-war-dro ; keit pado d'az luskel, Bez eürus ha dinec'h, ma bro gaer Breiz-Izel !

Blavez mat, d'it ive, skrivanier kalonek, Savet evit difen gant nerz hon brezoneg, Yez koz hon c'hentadou. Ra welfomp c'hoaz founnus Kalz oberou dispar, entanet, lugernus, Nerzuz ha leun a fe, 'vit souten ar brezel Eneb al levr hudur, war douar Breiz-Izel !



AR C'HRISTEN

E Skol ar Skritur-Zakr hag ar Skiant vat, 'warbenn ar Mirakl

Ouspenn Miraklon Jezuz ha re an Ebestel, e weler er gwir Iliz kalc Miraklon oc'h errount a-hed an amzeriou, ha, zoken, gwelet a vo anezo betek an divez, betek an amzer diveza eus ar bed. Rak Jezuz e-unan en deus el lavaret ha prometel : « *E gwirionez, e gwirionez, emean, m'en laoar d'eo'h, an hini a gred ennon a raio ar burzudou a ran, hag a raio, zoken, brasoc'h burzudou c'hoaz.* » (Sant Yan XIV, 12).

N'ho peet aon ebet, lennerien ; beza vezo betek fin ar bed Miraklon e gwir Iliz Jezuz-Krist. Lennit istor an Iliz Katolik, hag e weloc'h sklear eo gwir ar pez a lavaran. Doue an eus falvezet ze d'ean evit diskouez, dre ar Miraklon great eus e berz, e pe leac'h eua ar gwir Iliz Jezuz-Krist, ha dre eno e lavar d'eoemp holl peger bras c'hoant en deus e vemp holl salvet. Rak-se, n'eus fors pehini eus an holl boblou zo war an douar, pobl Bro-Zaoz, mar kirit, pe hini an Alemagn, m'an deus c'hoant da c'houzout e pe leac'h eua Iliz Jezuz-Krist, n'en deus ken nemet sellet mat e pehini eus an Ilizou a zo endro d'ezan e vez gwelet Miraklon. Ar Miraklon a zo e giz pa lavarfen biz an Aotrou Doue astennet 'vit diskouez da heb unan e Iliz, pe c'hoaz ar ziele, ar zinatur lakeet gantan warnezi evit ma wezo an holl eo d'ezan.

Miraklon a zo bet, ha Miraklon a vezo, ato en Iliz Katolik. N'ho peus nemet sonjal : pa vez hano en Iliz da lakaat unan bennak, goude e varo, war roll, e renk ar zent, (da ganoniza eun den santel bennak, evel a le 'vret). Hon Tad Santel ar Pab n'her gra nemet war bouez m'en devezo an den-ze great pemp Mirakl, ha pemp Mirakl bras hag eus an dibab kenta, hag amprouet mat gant testou a zoare. Nag a dud a vez lakeet, bep ar mare, war roll ar zent ! Ken-ze, eo stank ar Miraklon en Iliz Katolik.

O welet kement a dremen en hon amzer, e leu d'in ar c'hoant da lavaret ez a war gresk ar Miraklon en hon touez. Providanz Doue, m'oar vad, en deus c'hoant da lakaat, dre eno, an dud da zistrei d'ar gwir Feiz, dra ma teufont, siouaz, da zebhlantout trei kein d'ez. Nag a viraklon a c'hoarvez e Lour ! Ha pa ne ve etouez ar Miraklon-ze nemet unan hag a ve, e gwirionez, eur Mirakl, e ve a-walc'h c'hoaz evit diskouez eo ar Relijion gwirion, pa'z eo gwir eo en eur vro gatolik, e Franz, eo e plij gant Doue, dre zaouarn ar Wer'hez, diskouez evelse e c'halloud.

Eaz eo d'an dud fallakr nac'h ar Miraklon-ze, ha lavaret en o skridou, en o c'helaouennoù, bep seurt gevier ha gwaperez. Diesoc'h eo d'e harpa war ar skiant vat ar pez a leveront. Ma o defe c'hoant da veza kredet gant an dud a skiant vat, e rankent er penn kenta tout, kemeret ar boan da vont da welet mat ar pez a dremen e Lour, na da ziskouez freaz, da c'honde, mar gelfent, e ve faoz ar Miraklon-ze. Mar kirit, me lavaro d'eo'h petra reas eun aotrou hanvet Artus. Heman a oa eur c'hristen mat ha start en e greden. Eun devez oc'h en em gaout inouel-maro dreist an deziou-all, ha drouk ennan o welet eur skrivagner difeiz ha dizakr o wapaat bemdez, en e gazeten, ar Miraklon kontet gant an aotrou Herri Lasserre en e levr diwarbenn Lour, ez eas da ginnig d'ean dek mil lur, ma c'halje dont a-benn da ziskouez e vije faoz unan, n'eus forz pehini, eus ar Miraklon-ze. « Kontant oun, eme an aotrou Artus d'ezan, da lakaat an dek mil lur e ti an noter a garoc'h lavaret d'in, da c'hortoz ma vezoc'h deuet a-benn eus ho labour, hag en e di o c'ha-voch da douch kenta ma vo prouet ganeoc'h ez eus anezo eur Mirakl faoz. » Mes ar skrivagner gaouiat na asantas ket. N'e ket, a hellit kredi, n'en divije ket avi eus an dek mil lur ; re zies eo e oant da c'honit. Lavaret, skriva gevier a zo es, mes ober traou gwir anezo a zo dies.

Evel a wellit, lennerien, Miraklon a c'hoarvez en Iliz Katolik. Hi eo eta gwir Iliz Jezuz-Krist. Etouez ar Brotestanted, er c'hontrol, abaoe ma 'z eus anezo, n'eus ket bet gwelet an distera Mirakl ; ar pez a zo eur merk sklear n'emaint ket er gwir Iliz fontet gant Jezuz-Krist. Rak, eur wech c'hoaz, Jezuz en deus lavaret e roje d'e Iliz an donezon a Viraklon.

KATOLI.

HANO JEZUZ

War don : *Hano Mari.*

Enn hano sakr ha dudius.
Eo hoc'h hano, o ma Jezuz,
Jezuz !

Eo hoc'h hano, o ma Jezuz.

N'e ket 'vit lazet teod an den,
Nag e spered' evit kompren
Jezuz !

Nag e spered' evit kompren,

An dousder an eus hoc'h hano,
Nag ar graso neuzs a ro,
Jezuz !

Nag ar graso neuzs a ro.

D'an nep a deu, a greiz kalon,
Hag a deu da c'houlenn pardon,
Jezuz !

Hag a deu da c'houlenn pardon.

An tec'h a ro d'an drouk-sperad,
Evel e ve Jezuz lazet,
Jezuz !

Evel e ve Jezuz lazet.

War an douar hag en nevo,
Dre-holl e peder hoc'h hano,
Jezuz !

Dre-holl e peder hoc'h hano.

Ma vo meulet er broiou pell,
Ha dreist pep tra 'n hon Breiz-Izel,
Jezuz !

Ha dreist pep tra 'n hon Breiz-Izel.

Gret, Jezuz, an de a hirie,
Gret warnomp eur zell a drue,
Jezuz !

Gret warnomp eur zell a drue.

Dispont neuze, ni a drec'ho,
War enebourien hoc'h hano,
Jezuz !

War enebourien hoc'h hano.

Ha pa vefomp prest da vervel,
Ma larimp hoc'h hano Santel,
Jezuz !

Ma larimp hoc'h hano Santel.

Y. M.

AL LIN EN BRO-DREGER

'Vit rei kalon d'am lennerien da heuilh ar pen- nadou a denio warlerc'h heman, greomp eur zell war ar gounid a haller da gaout eus al lin.

Al lin a ve dastumet 'benn e ver krog gant an est ; ne harz ket eta da lakat legumaj en douar goude ma ve et ermeaz ar park, hag al legumaj-ze 've kavel 'benn ar goanv.

A hent-all, mar deo labourus mat al lin, gant an tree-all ve red ive labourat, temzi, c'hoennat, dastum.

'Vit bean freaz ha sklêr, setu aman 'vit daou zavez arat, (100 ar pe 1 hectar) an dispigu hag ar gounid a gont al labourerien o deve en Bro Tre-ger.

DISPIGNOU :

Da gentan, ma oc'h merer e kontfel endro da 20 skoed priz an devez arat douar, kwit a gieu-ziou.

An had : 100 lur ;

An demz chimik : 34 lur.

Al labour, kontet oll a deufe da gant pemp lur ha hanter kant evellen :

Pemp devez labour 'vit trei an douar peder gwech : 50 lur ;

Pevar warnugent a dud da dennan al lin diwar o dispigu, pe 'n eur gontan o fansion : 60 lur.

Gret ar gont e kaver pevar c'hant lur a dispig- nou, pe wardro, 'benn ve paet an douar, lakat al lin, tennet, reuvelet.

GOUNIDOU :

An devez arat lin a ro well-waz etre tri mil pemp kant ha pevar ha pemp skoed ar c'hant. E ve gwerzet neuze :

Al lin wardro 1.000 lur ;

An had diwarnan a dalv 120 lur ;

Ar « prime » a zav 60 lur.

Gret ar gont, e kaver wardro daouzek kant lur.

Neuze 'ta, diwar daou zavez arat douar e tenner wardro eiz haat lur a c'hounid kwit.

Klêvet an eus digant unan eus a botred al lin 'n evoa bet eur blavez, diwar pevar ha tringent ar (8 ar neheutoch 'vit eun devez hanter arat), pemp mil eiz kant a lin.

Gwerzan reas ar milier eur pez rabad da hanter- kant skoed. E c'hreun a werzas ugent skoed ; seiz lur ha daou-ugent an evoc 'vit « prime » ; tapout a reas evelse nao c'hant eiz lur ha daou ugent a c'hounid.

E demz a gouste d'ean c'houec'h lur warnu- gent, hag e had, (daou c'hant hanter anean), seiz lur ha tringent. Tennet 93 lur eus 948 lur, hag e chomo 855 lur, 'vit paean an douar hag al labour.

Ne ve ket bep bla kont evelse ; mes, evel am eus lavaret, well-waz, al labourer a deu da c'hounid koulskonde endro da eiz kant lur kwit, diwar bep daou devez arat.

Kentan gwech a stagfomp da gontan penos e labourer al lin en Treger, 'vit tennan dioutan kement-all a c'hounid.

D...

TOL-ESA WAR BUE SENT BREIZ

Sant Konwoion, abad kouent Redon (800-868)

An abad Konwoion hon c'has d'ho lavaret 'vit ho peñs da viret d'ean al lec'h an eus dibabet da benn Doue evit- doch hag evit Breiz-Izel.
(Konzoù Lohemel, distell
Konwoion, da Nomenoez.)

Ratuili, en e gastel Lez-fô, a oe souezet pa oe lavaret d'ean 'oa c'houec'h manac'h breton ouz toull e zor deut da c'houlenn digantan alizeu eur c'horniad douar da zavel eur manati. Mes Doue an evoc kompezet an hent dirak e vignoned ; digmeret mat e oant ; Ratuili an em gavas, zoken, evurus hag enoret o tioneed goude eul loden vat a zouar etre an diou ster, el lec'h m'o devoa dibabet.

Klasket e oa raktal eun tam sikour etouez al labourerien diwardro, ha setu viket-veas eskopti Gwened, mab ar senedour Konon, o tougen koad gant e vignoned, o plantan postou evit sevel bu- han ha buhan eun torkad lochennoù da 'n em repui.

Ar vrud a valeas. Ne oa ket savet mat ar rusken, ma oe red he c'hriski da rei lojeiz da c'houec'h vanac'h neve.

Divizet eo neuze etreze ne vije nemet eur yalc'h, ha Konwoion oe kemeret da rener pe da abad ar manati.

Teusk e oa an treo gant ar venech en o lo- chennou. Int, avad, an em gave evurus ; seblan- tout a re d'e o devoa kwitaet an douar hag et da chom hanter-hent d'an ne, pell dreist ar bed.

Mes an diaoul, hag eo e vicher lakat displi- jadur ha poan 'lec'h ma ve evarasted, ec'h eas droug 'n e gorf o welet pegen difrouc e veva me- nec'h Roton (pe Redon) dindan askel an eia. Pouzian reas eta unan eus o amezien, eun dijentil hanvet Illoc, da vont d'o c'havet ha da lavaret d'e :

— An douar ho peus kemeret a zo d'in ! Skar- zet buhan hag et polloc'h !

An abad Konwoion a zizroas neuze war Ratuili :

— Penos? emean, an douar-man na oa ket d'ac'h?

— Eo avad! eme Ratuili.

— Nan zur! eme Illoc.

Penos ober? Na oa nemet eur barner en Breiz d'ar mare-ze ; hennez e oa letanant an impaler, o chom en Gwened, eur Breton hag e vije gret Nomenoez anean.

Konwoion a dibabas etouez e venech ar fran- ane, Lohemel, advokat ha kôzaer flour, hag hien kasus da Wened evit difeun e gôz.

Pan arinas ar manac'h diek Nomenoez e kavas eun Illoc, Lohemel a gomzas da gentan :

— Oteo, emean, an abad Konwoion hag e dud a bed ac'hanoc'h, en hano Doue ha mad hoc'h ine, da viret d'e an douar o deus bet en Roton da zavel eur manati, rak gwestlet o deus o bue da bedi Doue evitoc'h ha Breiz-Izel.

Ar c'homzoù-ze a bikas kalon ar prins, rak kalon eur gwir Vreton a oa ennan.

War ze, Illoc a zavas e dol :

— An dud-ze, emean, o deus skrapet an douar-ze

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENEBEROEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EBHANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNERRE, 27, bali Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Fouez An Geiz.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekozaio a Vreiz.
Fouez An Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek
Yez an dud vad ha kalonik.
Yez ar feiz zo : ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'hedl
MILIN.

Ar zun a deu, lenn aman eur pennad gant
Ar Yeodet : MELVED HA GWADEREZED.

ALI

Pedi reomp al lennerien a skriv d'imp, da dol
evet mat, pa glazont o lizer, da welet ma na
bouez ket ouspenn 15 gram.

Pedi reomp ane ive, ma ne gasont nemet la-
bourioù da voutan, da lezel o lizer disklos, ha da
lahat warnean eun timbr a wenneg hepken.

Hon yalc'hig a glemm pa digoue d'imp renkout
paean d'ar post « surtaxe », 'oil lizerou re
bounner.

ALUZENNOU "KROAZ AR VRETONED"

An dimezel Sant-Per. 16 lur 2 real.

An dimezel Sant-Per a zo let a-viskoaz eus
gwellan madoberourien Kroaz ar Vretoned. 'Vit
ar Brezonek he dorn 'zo bepred digor, rak gwelet
he deus a-dost, pegen talvoudus eo he yez da
Vreiz. Mil bennoz Doue d'ei da trugare.

BREURIEZ AR BREZONEG

Bugale en Breuriez ar Brezoneg, ar 23 a viz
c'houevrer : 110.

Ar c'hantved a zo eus Tregrom. Kaset vo eta
Bue sant Erwan da Madeleine Le Mercier, Tre-
grom.

SKOUER MAT DA HEUILH

Otro person eur barouz eus Treger a gemere, ar
zun-all, 10 pias en Breuriez ar Brezoneg, evit
ar vugale eus e barouz a ouije ar gwellan o c'ha-
tekiz.

Setu eno eur priz a giz neve hag a zo eus ar
gwellan a halfed da rei d'ar vugale : lakat ane,
'vit eiz real, en Breuriez ar Brezoneg ; o devo
neuze eur gazeten 'pad ar bla da leun ; studi war
ar brezoneg, prijou 'vit o labour, ha lod en ter
ofereñ laketgant ar Vreuriez.

Kinnig a reomp kement-man da gement hini an
eus da zoursial eus bugale 9, 10, 11, 12, 13,
14 vla, ha prijou da rei d'ei, gwech pe wech.

ER C'HOUEC'HED

Ar lun, an ugent a viz genver diwean, Eugène
Jouin, eus tol Bro Plouagor, hucher en Plouaret,
a digasas eun tam paper glas, — eur ciduren ve
groet eus an dra-ze, — da berson ar C'houerc'hed
da vont ermeaz eus e brespitor dindan an eiz de.
Eiz lur nemet daou wenneg e c'houlenne ewit e
geverdi : an hucherien a zo c'houiled hag a distag
eun toullad gwenneien diouz ho kodet buan ha
buan. Ar person na reas ket muioc'h a van eus
ar paper glas ewit ne ra kastel an Taro Montroulez
eus eun tol aval poaz, ha koulskoude oa treme-
net ar gorden en e c'houg war skloum rederez.

Ne oa ken nemet stardan ar vourel d'ober. Da
c'hortoz, ar person oa war e droadig kam en e
di...

Ar meurs, 14 a viz c'houevrer, abred eus ar
beure, dindan mantel denval an noz, — en noz
ve groet an taolio kaer, — eur vanden archerien
war varc'h, war gezek houarn, diredet eus ar gear
arok oa krog an deiz da c'houlouoi, a sternas
tro-war-dro presbitor hag iliz ar C'houerc'hed,
Biskoaz kement-all a archerien na oa bet gwelet
aman war eun dro, abaoe an deiz oa bet dibennet
aze, war ar leur-gear, Bertho ar munter.

En o sav war dreujou ar presbitor, o krenan
gant ar riu war ar reo gwenn, Chevrolier, kon-
trollaer nevez Plouaret, pôtr polis Lannou, eur
seien ru-gwen-glas dre e dargreiz, daou lankon
yaouank, liou ar galeou en o c'herc'henn, hag o
binviou labour da divarc'han dorjo gante en o
daouarn...

— Otro Person, digoret an nor d'imp ma hou
devo tro da dol ac'hanoc'h ermeaz ho ti arok ma
vo savet an heol. Skanvoc'h a ze vo hon bec'h
mez da distrei d'ar gear...

— Deuet ebars dre doull an alc'houez, pe e vano
beg ho fi da skornan war an toull.

— Dao! Dao! Dao! Hag i da bigosat war an
nor. Houman, sparlet mat gant daou linvier houarn
a-ziabars, na ra na van na zebant, hag an dud
honest 'bars an ti, dre doull ar prenestr, breman
p'o deus brizillet ha minset ar gwer warnean, an
ampreñs a zo ane!

C'hwel leun an ti a ibilhen ha na ve ket lec'h
da skuban ar presbitorio hag an ilizo war o lerc'h,
nemet pa denot d'ober an inventar war an iliz,
pe da rei ar porz d'ar veleien. Redek reont dre an
ti, evel eur vanden chas o kas war eur blei, da
glask ar person. Strakal, klemp ha garu a ra an
dorjo divarc'het ha drailhet, ha person ebet be-
pred!... Kouezet int warnean, ha laret a ra d'e
grons ne dec'ho diouz e di nemet dre fors ha gant
e gureed. — Ped ho peus? — Daou. — Pelec'h
emañt? — Klasket! — Klaskerien vat a gav
lec'h ne ve ket. Hag i d'ober skilhioù gant an do-
rojo a ra c'hoaz fas koat d'e... Kavet ha dilojet
eo an otro Briquir d'e dro. Ne van ken nemet
unan : an ezetan da diguzan, dre ma c'h eo ar
brasan, dre m'an eus eur vent kaer ha barrek ive
da daoubennan, da wintrau daou pe dri archer
gant eun tol dorn ; ar pez na rei ket, e naskont e
zousder a veleg a dre'ho war e nerz a den. 'Man
ar gwidaled war e lerc'h, stad enne o sonjal n'o
deus ken nemet unan da gat. Epad eun eurvez
amzer, hir evel eun devez hep bara, latan hir
moan an archerien, potr polis Lannou, gant ar
seien 'oa gantan pa oa bet o taoni an norjo war
iliz kount Lanvellec, kontrollaer Plouaret a ra ar
provision en tro an ti, eus ar leur-zi d'ar solier,
eus an oaled d'ar pen da traou. Kaer deus klask
ha diglask, furchal, fuketal kement koigu tenval,
kement toull du zo 'bars an ti, ha diavez an ti,
kaer 'deus c'houesa ar gweleo, an eil warlerc'h
egile, dindan, war c'horre hag ebars, kaer 'neus
o fri bean tano, na gavont ket an otro Bonniec.
Nag o dije troet tu d'an ti, biken n'o dije kat
anean. An otro Bonniec 'oa du-hout, en tu-all da
Bark-ar-mestr, o prezeg da vugale Pont-Melvez...

Pinou ha mezek, hir o mulgenno 'vel re eul
louarn koz paket gant eur bolez yaouank, meve-
lien Clemenceau, drouk enne, a deu da dizac'han
o c'horfad drouk war choug ar paour kez person.
— Pera? Abalamour da Zoue, a c'houlen latan
an archerien, eo e stourmet evese? — Ya, abala-
mour da Zoue e tifennan ma zra, evel ma tle pep
perc'henn hen ober. E dra d'e berc'henn, eno, hag
eno hepken, 'man ar gwir.

Ar C'houerc'hed. — Digaset an alc'houez d'iu,
hag ermeaz dustu!...

Ar Person. — Tud dilampet em zi dre doull ar
prenestr n'o deus ezom ebet eus an dialc'houez da

vont ermeaz ; ha, c'hoaz eun tol, an ti 'zo d'iu
hag ar porz 'zo dec'h!...

Nec'het evel an diaoul war ar c'hravaz, pa oa
goulennet digantan pehini 'oa ar pen arok diouz
ar pen a-dreñv, ar c'houerc'hed a gasas eur c'har-
rons da di hent-houarn Plouaret, da gerc'hat
Viaud, ibilh prefed, pe sous-prefed Lannou.

Heman a dired a droc'h-tranch, a droc'h mons
kaer. N'e ket digouezet mat er presbitor, pôtr e
vantel du a glask lakat skaan an otro Person
er porz. Heman 'gav ken kri, ken kalet, tol e
dreid, ewit ar wech diwean, dreist an trejoui-ze
e tremene bemdez da vont d'ofereñnan, ken ma
krog start, gant e zaou zorn, en eur varen houarn.
Tri bikol pez tanfoueltren archer a ra d'e an dis-
krigi, ha setu an otro Briquir hag hen war an
hent bras, dindan toen an Nenn, dirak an dud a
strink an dour eus o c'halon mantret en o daou-
lagad, dirak an dud o hopal foi, hu ha harao war
ar gwaskerien. Laket ermeaz eus o zi, ar veleien
a red war eun da di an otro Doue, d'an iliz, d'o-
ferenna. An archerien a grog en kolier ar zakrist,
da harz anean da dintan an ofereñno, ha setu
chao 'barz an iliz, etre pôtr ar gouarnamant hag
ar person, a lavar nan eus lezen ebet hag a difen
tintan an ofereñno.

Lezet eo ar zakrist da vont betek korden ar
c'hloc'h. Hep mar, pôtr ar gouarnamant a zo
diwar oenan ar chas : monez ar c'heier biniget
hag a zo ken flour, ken dudius da ziouskouarn ar
gristenien, he deus ken kounnaret ane, ken dustu
warlerc'h an ofereñ, pa oa ar person o laret e
Bafer ouz troad an oter, 'zo deut daou archer
d'ober eur prosez verbal d'ean, abalamour an evoa
gourc'hemennet d'ar zakrist tintan an ofereñno.
Gwelloc'h dije groet mont d'ober prosez-verbal
d'unan eus an daou gaimant yaouank 'oa gante o
traillan, o taoni an norjo...

Al lapous honest-man, en eur dremen dre eur
gampr eus ar presbitor, a skubas eur morzol
nevez-flamm, kleuket mat gantan en e c'hodel-
guz, en e c'hodel laer-krampoez. Kent mont kwit,
eo kouezet e glipen war e glapen, e foru war e
vara, pa 'neus reuket diskrigi diouz ar morzol...
Kenavo, pôtr ar morzol! Kenavo, pôtr ar gouar-
namant! Muioc'h a vad a ra d'am daoulagad gwelet
seulio ho potou ewit gwelet ho bego.

JOB CHANTON.

BEC'HÈW HAG E ROC'HEL

D'an amzer-se, a-dreuz ar mor,
E teue da zouar Arvor,
Tud a Vreiz-Veur, a Iverzon,
Feiz beo ha start en o c'halon :
Digouezout rent a vagadou,
Evit savetei eneoù.
Unan ane, eun den a vrud,
A eruas dre eur burzud,
Seurt ne ve ket gwelet liez,
Hag a lennomp en e vuez.
Bec'hew pe Vec'ho 'oa hanvet,
En eur garg uhel 'oa savet,
Lod lar : arc'heskob Armakan,
Lod-all : pastor d'an nebeutan.
Safar na vo ket evit-se,
Santel 'oa sur ha den Doue.

Eun nosvez, Bec'hew, dre hunvre,
A glevas an Otrou Doue
O laret d'an : « Dihun buan,
Ha kerz e brezel oc'h Satan.
Dindan e c'halloud milliget,
An Arvoriz 'zo chadennet.

KROAZ ar VRETONED

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skood evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiik.

RENERDEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Fenez An Grez.
Gant brezonek eo douar ar feiz.
Gant ar gallekzoaio a Vreiz.
Fenez An Grez.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het.
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'hedl
MILIN.

ALI

Pedi reomp al lennerien a skriv d'imp, da dol
evet mat, pa glozont o lizer, da velet ma na
bomez ket ouspenn 15 gram.

Pedi reomp ane ive, ma ne gasont nemet la-
bouriou da voutan, da lezel o lizer disklos, ha da
lahat warnean eun timbr a wenneg hepken.

Hon yalc'hig a glemm pa digoue d'imp renkout
pacan d'ar post « surtaxe », 'vit lizerou re
bounner.

ALUZENNOU "KROAZ AR VRETONED"

An aotrou abad Penantun, rener *Breuz Breiz*
Kemper hag e genvrenneur. 20 real.

An otro 'n abad Dreanic, kure e Feiz, Bro-
Wened. 4 real.

Trugare a-greiz kalon d'an aotrou abad Penan-
tun ha d'e vignoned. Moullet hon deus bet, eur
pemzek de zo bennak, eul lizer hag a ziskoueze
nag a drubuilh o devoa bet kloer yaouank Kem-
per, argaset ma oant bet diouz o c'helendi ha red
d'e klask lojeiz war ar maez. Daoust da ze, na
ankouant ket nag o bro, nag a brezoneg, na *Kroaz*
ar Vretoned a zifenn an eil hag egile hag e kasout
d'o c'helonen ger eur vras a aluzen. Eur wech
c'hoaz, mil bennoz Doue d'e !

Eun nebeut barzed a oa en em vodet e Santez-
Anna da ober lid d'an eskob neve, da bedi evitan,
hag ive da starta mui-ouz-mui kenetrezo al liam-
mou a garante a dle unani ar varzed da labourat
gwelloc'h a ze. — Unvaniez a ranerz ! — evit Doue
hag ar Vro. Kaerat skouer a ro d'imp barzed
Gwened bodet holl en-dro da *Dihunamb*.

Trugare d'e evit an digemer mad o deus graet
d'hon rener koz. Bennoz Doue, dreist-oll d'ar
barz gredus Loeiz Herrieu, ha d'e vignoned, d'an
aotrou abad Dreanic ha d'an aotrou Povedig.

AN OTRO DUPARC

Gret eskob en Santez-Anna-Wened

Ar c'hazetennou gallek o deus bet komzet eus
ar gouel bras a oe dimeurs en Santez-Anna-We-
ned, gant sakr an otro Duparc. « Mam-goz » ar
Vretoned, an Itron Santez-Anna, he deus gwelet
eun devez kaer seurt n'he devoa ket gwelet
'boue pell 'zo. Trugare d'ei da vean roet d'ar Vre-
tonedd eun esbob breton, rak diouz he dorn eo an
otro Duparc.

Kroaz ar Vretoned he devoa eur c'hannad en
Santez-Anna, kaiget da heuilh ar gouel, da chileo
ha da zellet mat ouz pep tra 'vit hen disrevel
goude d'hon lennerien.

Mes kement an evoa da laret, ma 'n eus ket
gallet echui e labour 'benn mont er gazetenn ar
zun-man.

Ar zun a deu, avat, vo kavet aman, war e hed,
kalz welloc'h 'vit en nep kazeten-all :

SAKR AN OTRO DUPARC

MELVED HA GWADEREZED

Anveout a ret netra lousoc'h evit ar melved ?
Gwelet ho peus biskoaz loened muioc'h hudur
evite ? War gement tra gaer a gavont dre o hent
e renkont lakat eur rouden rukunus. N'hallont

gwelet man dirake, hep dont dustu d'en labea
gant o babouz. Dre-ze, ar velveden a zo kazet
gant an holl hag a-walc'h eo alies komz anei, pe
gwelet anezi oc'h astenn he c'horf litous war ar
glazur evit lakat an dud da heugi ha da laret :
ec'h ! !

Eu despet d'o loustoni, melved ar parkou ne
d'int netra en kenver eur rum-all a velved, melved
daou-troadek neuze, hag a deu ive da vabouzi
war gement tra gaer a gavont. Ar re-man eo mel-
ved ar Gouarnamant, pe e vevelien, digaset gantan
da c'houarn hon bro Breiz-Izel, ha pere na gavont
netra welloc'h eget teurel war hon Bro o babouz
hag o breinadur.

Marvad, o vezan ma 'z int lous oc'h-unan e fell
d'e ive lakat an dud hag an traou-all hevel
outé...

Sellet eus pevar c'horn Breiz, hag, eus ar Sav-
Heol, eus ar C'hreiste d'an Hanter-Noz, ne welfet
dra holl nemet roudenno rukunus ha lous ar
melved troadek-man.

O babouz a goue en peb lec'h ; labea a reont
peb tra ; ha, herve ar hoan hag ar zoursi a lakont,
e kred d'an den o deus touet morgan kaerder hon
Bro dindan eun doazan a fank, ha golo anei gant
eur c'houzilhaden deilh !

Kement 'zo a vo louzet gante : ar Vro, an den,
ar gizioù, ar c'hredennou, ha, dreist-holl, dreist-
holl, ar Yez.

Red eo laret o defe eneb d'hon Brezoneg karet
eur gasoni direiz. A-walc'h eo komz d'e eus hon
Yez evid ober d'e skignal o dent ; a-walc'h eo
komz brezoneg dirake, kerkerent en em lakont da
vallozi ha da gemer ac'hanomp evit chakerien
blouz, tud goue, diweat ha mad hepken da vezan
renet a vac'hadou, a daoliou treid.

Hon histor, hon zud vrudet, hon zent koz,
kement tra a ra nerz, galloud, enor, ha zoken
lorc'h hon bro Breiz, a zo dimantret gante falloc'h
'vit fall.

N'o deus evidomp nemet dismeganz ; n'o deus
diouimp nemet droug, ha, ma c'hallent hon ren
herve o c'hoant hag o sonjou, bezomp zur, pell
amzer 'zo e vije maro Breiz, pell amzer 'zo e
vijemp bet douaret !

Hogen, a drugare Doue, nag o c'hasoni, nag o
babouz lous na deu a-benn, na da vouga na da
denvalat koantiri hon Bro. Eur bar dour pe daou,
da laret eo, eun tammig kalon eus hon feurz, a
walc'h Breiz-Izel diouz o loustoni ha diouz o fank
hag a ro d'ei c'hoaz bravente en despet d'e.

Ar gwasan en kement-man eo gwelet ar melved,
an darnvuian divroidi, — pa na vent Bretoned
deut, dre garante 'vid o c'hof, da vezan trubard d'o
Bro, — o veva c'hoaz diwar hon c'houst hag o
tout, dre eno, da vezan gwaderezed hag a zuno
hepdale, ma ne garomp diwall, an daken diwean
eus hon gwad.

Ar Breizad an eus a-viskoaz dizanavezet hag e
nerz, hag e c'halloud. A-boan ma teu eun divroad
d'e Vro, a-boan ma komz d'ezan en hano ar
Gouarnamant, kerkerent ar paourkez Fanch-Kouer a
gren hag a bleg e chong ; kerkerent e laro :

— « Petra fell d'ac'h ! Int eo hon mistri... Red
mat eo zenti outé !... »

Hag en keit-se, an hini ne vije nemet mevel
ganimp, ma karchemp, a ra lezen en hon bro
hag a deu d'hon goapat, d'hon labea ha d'hon
gwada !

Ar waderezed a auve reiz spered aonik ar Breiz-
zad ; dre ze eo en em dennont kenkoutz gantan.

Hirie o gweler o veva en hon zouez hag int lard
ha flour, aotrone vras, war o c'hein livitennou hir.

En peb parouz, en peb keraden, hon deus savet
d'e kistel kaer, liag ac'hane e fell d'e, goude hon
gwada, babouzi war hon bro, hon yez, hon gizioù,
war zigare, ema, ober d'imp kerzet herve an
amzeriou hag ar c'hizioù neve.

Amzeriou ha gizioù neve !... Ah ! ya, melved
ha gwaderezed, c'hoantaüs int, hoc'h amzeriou
hag ho kizioù neve !... Eur blijadur, eur yec'hed
zoken eo sonjal enne... Dreist-holl, pa digoue
d'imp-ni, Bretoned, poanial start, noz de en hon
farkeier, evit gomd d'ac'h bara gwenn ha dizoursi,
ha miret evidomp hag hon bugale eur bevanz
dister hag alies dinerz, evurus c'hoaz ma n'hon
deve ket a zienez !

A-walc'h hon deus pelloc'h, hag diouz ho gwa-
perez, ha diouz ho sunez ! Hon bro a gav d'ac'h
a zo dare evid ar sklavach ?

N'an eo ket !

Nan, n'eo bet biskoaz, na vo biken !

Touellet eo bet enpad eun nebeut mat a via-
veziou, gwir eo, ze na lar ket e oa maro ; ne oa
nemet kousket. Hirie, a drugare Doue, e tihun
eus he c'housk kalet ; hirie e sav he fenn, hag
evel gwec'hall, e fell d'ei c'hoaz bleunia a-neve
dindan heol madelezus an aotro Doue. Evel
gwec'hall e c'hoall he Frankiz, hag evit se, na ve
red, evel gwec'hall ive, e tifenno he c'haerder, he
yez, he brud vat, didamal ha digaitbar, eneb
d'ar melved ha d'ar gwaderezed a deu d'he labea
goude beva diwar he c'houst.

Neuze, he mibien hag he gwellan bugale, ar
Varzed, a gano gant Taldir dirak ar gwaderezed
hag ar melved friket : — « Dihunet... Dizamm
out breman, ma Breiz ! »

AR YEODET.

Breman 'zo ter sun e oe moullet aman eur
zon gant AR YEODET :

KAN, BARZ YAOUANK

ar son-se a oa kinniget da MATHALIZ.

BREIZ HAG AR BREZONEG

Baleet a bep tu, dre holl ebarz ar bed,
Da glask ar Vro he deus ar muian a c'hened.
Klasket en hanter-noz, ha klasket er C'hreiste,
Er Zav-Heol, er C'huz-heol, klasket a bep koste...
Nenze c'houi a laro, pa vo actru ho vro,
Pehini eo 'r gaeran dimeus an holl vroio.
Me gred c'houi a laro, ha hep 'n em fazian :
'N eus hini par da Vreiz ; Breiz ac'h eo ar gaeran.

Mes mar deo dispar Breiz dre ar Grouadelez,
Kaeran deus eo hec'h yez, ar yez eo he buez ;
Ar yez-se oa gwec'hall komzet gant ar C'helled,
Ha breman 'zo gwasket abeurt ar C'hallaoned.
Mes ar Breton 'zo stag ouz eun tensor ken kaer,
Hag a dalc'h penn bepred eneb da bep gwasker...
Mes petra, Gallaoned, a ra d'ac'h kounnari,
Mar n'ouzoc'h brezoneg, n'ho paus 'met hen deski,
Elec'h dont da waskan ar yez a Vreiz-Izel ;
Rak ar Breizad 'vit Frans alies renk mervel ;
Pa deu an enebour da waskan Frans, hon Bro,
Ar Breton 'zo bepred prest da c'houzav 'r maro...
Biskoaz Frans na gavas etouez he zoudarded
Tud o deus nerz-kalon evel ar Vretoned...

Da viken, en Arvor 'vo komzet brezoneg ;
Gwasket eo, mes biken, biken ne vo mouget,
Ha Breiz 'vo ar gaeran dimeus an holl vroio,
Keit vo gleb ar blien a ra d'ez an dro.

EUL LENNER.

AR WIRIONE PEP SUN

Bean oa eun den hag a oa o chom en ean ti koz. An ti na oa ket fall, nemet e oa koz. An den-man, — an den a zo bepred chanj-dichañj. — e teuas c'hoant d'ean da zével eun ti neve. Ha petra reas ? Diskar a reas an ti koz, arôk ma oa tennet diuze an ti neve.

Setu en em gavas hep ti ebet, ha mat oa arru gantan.

Ar pezh a lavaran aman, n'e ket gaou, rak er Gamban an otrone deputeed, darn ana, zo kas ober memes tra.

Klevet ho peus komz eus lezen an « impôt sur le revenu » ? Kentan artikl al lezen-za a zo skrivet evellen :

— Ar peder goutribusion goz a zo diskaret. Herve, red mat eo dispen ar re goz, arôk komz eus ar re neve. Ar gouarnamant n'houl ket gwelet e dud o tizrei war dre, ha, gant se, e fell d'ean, kentan mad vo gret, ve c'houet an tan en ti, 'n eur vont ermeaz.

War ze, darn a gav mat an ti koz ha n'houl ket klevet komz eus an ti neve ; darn-all a gav si en ti koz, mes n'houl ket e ve na taret na diskaret pen-da-ben : gwel eo gante 've dispennet tam ha tam, betek goût... rak an ti neve n'e ket zavet c'hoaz, ha kalz a lavar, ma ve zavet, na vo ket mat da lakat, zoken, ar moc'h.

Gout ouzoc'h holl, lennerien ger, 'zo bet betek breman peder goutribusion :

war an douar,
war an dud,
war al lojeiz,
ha war ar c'honversou.
Ar gouarnamant a fell d'ean veint laket a goste ha gret, en o lec'h, an « impôt sur le revenu » ar goutribusion war al leve, pe, kentoc'h, war al leveou, rak seiz seurt leve a zo :

leve diwar an douar ;
leve diwar al lojeiz ;
leve diwar paperou-arc'hant ;
leve pe gounidou diwar ar c'honversou hag al labouriou ijin ;
leve pe gounidou diwar al labour douar ;
leve pe pansionou, goprou micherourien ;
leve pe gounidou ar micherou 'vel avokad, medisin, hag all...

Ouspenn ar goutribusion diwar pep leve pe gounid, eun all a vo c'hoaz hag a vo laket war an holl leveou ha gounidou 'n eur bern, pa dapont pemp mil lur ar bla ; da laret eo, goude bean paet 'vit ho konvers, ma teu ho leveou ha gounidou-oll da dapont pemp mil lur etreze, e paeft adarre diwarne.

Ar sosialisted a zo o voutan war ar gouarnamant d'ober al lezen neve-man, rak bean 'zo enni peadra da lakat reveulzi ha trouz dre ar vro a-bez.

SON AN IVINEN

Ar zôn-man a zo c'hoaz eus ar re goz o deus gret o zro Breiz lies a wech, hag a vije et da goll panevert *Kroaz ar Vretoned* he deus 'n em gavet war o hent a hag digemer ane. Adalek breman, pan eo skrivet, ar zôn na vo ken kollet, rak 'vel ma lare ar re goz, « ar gouz a vij kwit, mes ar skrid a chom. »

Eun tam tól krib 'zo bet gret d'ei arôk he rei digemer d'eun dra bennak mez hen gwelet. Hogen, *Sôn an Ivinen* he devoa ezom 'vije c'hoennet ar galleg diouti.

Trugare d'an daou otro o deus, unan ane, roet d'in ar c'homzou, hag egile skrivet an tón.

D.-N.-D.



Ar c'houec'hved eus a viz goue-ron, Mil eiz kant




tri ha daou-n-gent, Eur c'holl bras a zo ar-ru-



et, Gwe-Jan a ran ouz hen la-ret! Eun ti-ad



[bras hag o-no-rus 'Zo la-ket 'noue stad



ru-e-zus.

Ar c'houec'hved eus a viz goueren, Mil eiz kant tri ha daou-ngent, Eur c'holl bras a zo arret, (Gouelan a ran ouz hen laret!) Eun tiad bras hag enorus 'Zo laket 'neur stad troezus.

Aboue tri c'hant vla, marteze, Holl yer ar bouk, a re da re, Aglude en ivinen vras, 'Uz d'ar vered ha tost d'ar groaz, Biskoaz n'o devoa meritet Bean eus ar ouenn digludet.

Kerkent ha ma savas ar vrad E vije diskaret ar c'hud, En em dastumas ar c'higi, Ar yer goz hag ar polizi, Gant glac'har bras ha poan-speted, E tiredjont d'an em glevet.

« Petra d'ober? Pelec'h monet, Ma ve 'n ivinen diskaret? A rum da rum, a ras da ras, E kludemp en ivinen vras : Ma ve zellet ouz al lezen, Aboue pell 'zo, ni zo perc'hen.

« Hag e kontfen parzek real, Evit sevel d'imp eur c'hud-all, Biken ne vemp ken kaer kludet 'Vel en ivinen vinniget! Bihan ha bras, koz ha yaouank, Pep hini an evoa e vrank.

— O ya! kentoc'h, 'me ar c'hog ru, E chaou an avel a du, 'Vit ne c'houzavfen ma biken E ve diskaret ma gween; Rak me auve al lezenno, Kenkouz ha mab dimeus ar vro.

« Eur fallagriez a va groet, Ma ve 'n ivinen diskaret ; Ar bed, sionaz, a zo karget, A dud fall hag interestet ; Hag e welen koll ma c'hriben, Me a reuko heuilh al lezen ! »

Mont ra ar c'hog, a gammad vad, Da c'houl ali an advokad, Mes 'warben ma c'h o distroet, An ivinen 'zo diskaret, Ha setu ar c'hag daoubennet, Hag e oll diad glac'haret.

— Sionaz! ivinen vinniget! Pelloc'h ennout ne gladfomp ket! Breman hon bue 'zo gwestlet Ha d'al lern griz ha d'ar martred : Te, ivinen baour, 'zo troc'het ; Ha ni, marteze, vo muntret ! ...

« Kludet war da vrankou uhel, Goude strakal ma dioueskell, Ar bouk oll a-bez a zone, Pa losken ma mouez da vale! Alies am eus dihunet Ar boukiz dies re gousket.

Diwar ma brank, me 'm eus gwelet Kalz a everien kaletet, O ruilh, o tirzoni, En em ganan, o chikani : Furoc'h evite ve 'l loened, Rak, d'ar c'houlz-se, 'vijent kousket.

Gwelet am eus, dindan ma brank, A hed an noz, potred yaouank ; An eil d'egile 'n eus kontet, Kojou bihan, konchou kuzet, Mes marteze vefent nec'het, Mar beint kontet d'o mestrezed.

Diwar ma brank, me 'm eus gwelet, Niver bras a gomerezed, A di da di, a dor da dor, Henvel ouz gwraze a enor, Ha, goude bean klakennet, Eur « borsion » vije lipet.

Gwelet 'm eus c'hoaz, diwar ma brank, Eur wech bennak potred yaouank, O laerez keunet hag uo Evit ober fritadenno ; 'N o flas e fontfen gant ar vez! Koachet, koachet 'la, potred kez !

Ma fijadur a zo achu, Pelloc'h tol kaer ne welin ma, Ma c'halonig a zo mantret, Pa zonzan 'n ivinen troc'het ; Mervel a ran gant an anken... Kenavo evit birviken ! »

Gant ar c'hog ru hag ar c'hog gwenn, Eo bet zavet ar ganaouen, Gant ar yer goz eo bet skrivet, Gant ar polizi vo kanet, Hag evelse e vo miret, Souj an ivinen vinniget.

Istor gweledigeziou an Itron-Varia en Lour

Bernadet a zozjas da gantan miret eviti ar pezh he devoa gwelet ; mes p'an em gavas hec'h-unan gant he c'hoar, e kontas d'ei he doare ouz he fedi da devel.

Ar peurest eus an de, ne baouezas ket da zonzal en « itron », ha pa deuas an noz, e kreiz ar pedennou, ar plac'hig, teneraet he c'halon, en em lakas da ouelan.

— Petra 'zo? eme he mam. Mari a respontas evit he c'hoar hag a gontas ar pezh a oa c'hoarvezet e kichen Masabiel.

— Huvreou eo kement-se, ma merc'h, eme ar vam ; tennet an treo-ze diwar ho spered, ha ne dizroet ken da Vasabiel.

Bernadet, evit zenti ouz he mam, a chomas daou de hep dizrei d'ar mene ; mes d'ar zul, 14 a viz c'houevrer, e talc'has kement war he c'herent, ma oa lezet da vont gant he diou gamaradez, etre mern hag ar gousperon.

Pemp pe c'houec'h plac'hig-all a deuas da heul, hag en em gavout, ar wech-man, eiz pe nao dirak roc'h Masabiel.

Eur vuredad dour binniget a oa et gante, rak mam Bernadet he devoa lavaret penôs an diaoul en em diskoueze evelse awehou.

Bernadet a daoulinas dirak ar bod spenn roz hag a reas he feden. Kerkent ec'h estlammas :

— Man aze! man aze!
Unan eus ar merc'h bihan a lavaras :
— S'lap dour binniget ganti.
Bernadet a s'lapas dour warzu an « itron » :
— Mousc'hoarzin a ra ouzin, emei, en eur blegan he fenn.

He c'hamaradezed a daoulinas endro d'ei, mes na welenet netra. Souden, drem ar plac'hig a sklêraas, o tont, a dam da dam, lugernus evel an heol ; ar merc'hed bihan spontet hag o kredi e oa Bernadet o vont da vervel, a dirollas da c'harm.

Gervel a rejont anei ; mes ne glevse seurt ; he zellou a oa stag war kleuzen ar roc'hel, etal ar bod roz.

Diou vilinerez diwardro a diredas da welet petra c'hoarvee. Menel a rejout evel notet o welet stum Bernadet ; evit komz outi ne re van ebet. Unan eus an diou blac'h-man a yeas da c'hervel hec'h mab, eur den a eiz via warngent ; Nicolau vije gret anean.

Heman a denas, 'n eur c'hoarzin ; mes dal ma welas Bernadet, e chomas dilavar.

— Biskoaz tra ken souezus na welis em bue! emean.

He vam a lavare d'ean !
— Krog enni ha digas anei ganit !
Mes ne grede ket, emean, oa dia da stokan eur biz ouz an et-ze.

Eun dro bennak, koulskoude, e krogas 'n he brec'h, hag e kasas anei goustadik tresek ar vilin.

Bernadet a gerzas 'vel 'n eun luuvre betek an ti ; eno e teuas d'ei adarre hec'h anaoudegez.

Ar plac'hed bihan-all a oa et d'ar galomp e ker da gas ar c'helo. Mam Bernadet a glevas, hag hi o kemer eur vaz, hag o tont.

— Penôs, emei, arzodez, c'hoant e teus da lakat ilho ar vro war hon lerc'h. Gortoz, ma ya da zistagan da « itron » diouzit !
Ar vilinerez a harzas ar vam da skei he bugel.
— Ne ret poan ebet d'an et-ze emei !
(Da heuilh).

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 rent ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
3 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENEUEZEN

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAUNOUC-KONVERZ

An Aotrou Tossellera, 27, bali Charner, a zigemer aezo.

SAKRIDIGEZ

AN AOTROU DUPARC

an Eskob breton

E SANTEZ-ANNA-WENED

Ar zùn dremenet n'hon deus ket gallet komz eus ar gouelioù kaer a oa bet savet e Santez Anna-Wened evit sakridigez an aotrou 'n eskob Duparc, eskob ar Vretoned, Rener koz *Kroaz ar Vretoned* a zo en em gavel er gouel gant hon c'henvreudeur vad a Vro-Wened, en o fenn an otrone Herriou ha Mellac, renerien gredus *Dihunamb* ha *le Pays breton*. E-kreiz lidou ar zakridigez, a oa brao kenan, an otrou abad Buleon a reas eur brezegen dispar diwar-benn ar *Vezeien ha Spered ar Vro*. Arabad ankonaat, emezan, ez omp, ni Bretoned, dreist-oll *tud a galon*. Dre ar galon e vevomp keutoc'h eget dre ar spered ha, gant-se, dre ar galon eo e tle ar veleien kemer o hent da c'honid eme ar Vretoned! Kement-se a zo bet intenlet ervad gant hon sent hag ho misionerien goz: heuilhomp o skouer! ha roomp ar gelennadurez kristen da vugale Breiz e brezoneg, *Yez ar galon!*

Goude lidou ar heure e oa eun dudi gwelet o fichala war al leur-ger ar mor a dud a oa diredet a bep korn a Vreiz da ouel an eskob breton. Na zaleas ket hon Rener koz da gavout eno, grounet en-dro da Herriou, ar barz kalonek, eur bern mignoned, difenourien ar Yez hag ar Vro e Gwened.

Gante e tremenas ar peur-rest eus an de en eun doare an dudiusa. E pen ar re a labour ar gwella evit ar brezoneg e Gwened eman ar veleien: Heuilh mad a reomp an hent a ziskoueze d'imp ker splan an aotrou Buleon en e brezegen ha dre ar brezoneg, dre lennadur *Dihunamb* dreist-oll (*Dihunamb* eo *Kroaz ar Vretoned* Gwened) e chonezout kalou Breiziz. An itronezed hag an dimezellet ive a ro harp da *Dihunamb* o sevel stroladour (comités) d'e skigna mui-ouz-mui war ar maez, hag ar hōtred yaouank a zo heligenta entreze da werza an niverennou anean: eun dibab eus pōtred vat Ero (pe *sillon*) an Oriant a oa o werza dirak dor-dal iliz Santez-Anna ha biskoaz eskwitoch gwerzerien al welis.

Goude kreisteiz e oa graet tro ker ha graet eur weladen d'eun ti hanvet *muske Nikolazic* pe, e brezoneg, *Mirdi Nikolazic*, miret ennan envorioù eus an amzer veuniget-se, pa deurezas Mam goz hon Zalver en em ziskouez da Nikolazic ha diskleria dre eno he c'harantez-dreist ouz ar Vretoned. Laouen e oa ganimp en em gavout er *mirdi*-ze, nemet e oa dent e-barz, war eun dro ive, eur bagad Gallaoed, Parizianed 'meus aon, a c'hoarze gwap war skeudennou sent koz Breiz a zo bet klenket eno. Gwelloc'h e vije beza klenka ane en eur chapel bennak, d'ar Vretoned hepken da zont d'o enori, rak ar seurt Parizianed gwapaerien na dleont ket nemeurteurel o zreid er chapelioù.

D'an indervez e oa adstaget gant al lidou hag e teujomp holl, barzed ha mignoned *Kroaz* ha *Dihunamb*, da zaoulina ha da bedi a greis hon c'halon e-harz aoter Santez Anna evit hon bro gaer a Vreiz-Izel hag hon eskob neve.

D'an abardaer e rankjomp en em zispartia en eur laret an eil d'egile: « Kenavo da gendalc'h Jugou. » Eur frealzidigez hag eun dudi eo en em voda, evel-se, amzer hag amzer, entre Bretoned ha gwelloc'h tu d'hen ober n'hon devoa kavet c'hoaz eget sakridigez hon eskob breton, an aotrou 'n eskob Duparc. D'ezan hon gwella mennoz, ra zello outan eus lein an nē hon zent koz, ra deurezo an aotro Doue skuilh warnan ha war e eskobelez e builha bennoziou!

"BLEUNIOU YAOUANKIZ"

Pedet ha hadpedet kant ha kant gwech, d'ober eun dastumaden gant ma zoniou, gwerzioù ha barzonegou, em eus sonjet, diwar eur c'houlz 'zo, senti ouz ma mignoned. Herve lavar eur rummad, kement-se a blijjo d'am c'henvroiz ha dreist-holl, da lennerien *Kroaz ar Vretoned*.

Marteze!

Bepred eo, panned pedennou stard ma mignoned hag o lizerou niverus, n'am ije birvirken kredet ober eul levrig gant trao ken divalo...

— « N'eus netra a zivdlo a gement a deu eus ar galon! a lare d'in, n'eus ket gwall-bell, eur c'henvreur karet... Da zoniou, da werzioù n'int ket groet, a dra zur, evit gonit ac'hant... Diwanet int bet en ez spered ha tec'hel deus da galon, evel ma tiwan ha ma sav en hon zraouiennou, ar bleunioù-ze a welomp d'an neve-amzer o tispaka d'an heol-vintin, hag a deul dre ar vro seul muioc'h a c'houez vad ma 'z int gwelloc'h a ze kuzet!... Ouspenn, ez int leun a fe, leun a garante-vro, birvidik a dezeridigez ha karget a zoniou uhel... En eur gir, tec'hel a reont deus ar galon hag, ouz o leun, ec'h efont war-eou d'ar galon! Netra enne n'hall strafitha ar spered ar muian auwzus na feuka an dioukouarn ar muian kizidik... An holl a c'hall o leun, koz, yaouank, bihan ha bras... Kutuilh ase eta, gra gante eur boked-ha, hep damant, kinnig anezan d'ar Vretoned... Digermeret mad e vo! »

Goude hic-vare'hata am eus sentet, pegwir n'hall ket ober a-hent-all!

Hepdale am o ar blijadur da ginnig ar boked-ze d'am c'henvroiz dindan an hano a *Vleuniou Yaouankiz*.

Perak *Bleuniou Yaouankiz*?

En toue ne gaven hano ebet dereatoc'h. Evel ma lar ma c'henvreur, ma barzonegou holl a zo groet em yaouankiz... Groet int ganin en kreiz an tēn ze a ra d'an den yaouank nijal gant al levneze, tridal gant ar blijadur ha kemer evel ma teuont ar vue, an dud hag an amzer; groet int ganin eupad an amzer-ze ma welen pep tra kuzet 'dveg eur voren a hunvredigez dispar, ma welen pep tra o vousec'hoarziu hag o lavaret: « Na brao eo bevan di-drubuilh pa ve ar galon direbech!... » Groet int ganin o chilaou an avel o vousekana er gwe uhel; o klevet an ezen flour o tremen dre ar balan hag o luskellat ac'hanon gant eun diskan klemmus; groet int ganin dirak hiboud skintin ar wazig dour hag o klevet bep mintin ha bep noz, kan dudius al lapousedigou; groet int ganin en eur hunvreal da gaerda ma Bro, d'he Furnez ha d'he Zantelezh gwechall... Groet int ive dindan nerz ar gounnar sakr a grog em c'halon, pa welen gwaskan ar Fe, mouga ar Frankiz, muntri al Lesided ha flastra ar Wirione... Groet int ganin gant ar c'hoant da zidalla ma c'henvroiz, ha d'ober d'e kerzet war roudou o C'hendadou... En eur gir, groet int ganin evit Doue hag evit ma Breiz karet!

Rak an diou garante-ze eo a ra d'am c'halon mouskana gant an avel, hirvoudi gant an ezen, kana gant al lapoused ha gouela, damanti war an droug groet ha war yenien, dizeblanter ha kasoni an dud a vreman.

Laret am eus gouela ha damanti... En gwirione, daoust d'am spered hunvreer ha d'am c'halon dinec'h, meur a wech, evel kalz a re-all, am eus kavet spenn dindan ar bleun kaeran; meur a wech, evel ma lare unan eus ma mignoned, eo bet digouezet d'in aze, evit lemmel eus ma zreid, pikou lemm ha kaled, hadet gant tud fall dre henchoù ar vue...

Dre-ze kalz eus ma c'hanoaennou a blijjo d'an dud a hoell; int ive a auye ar vue. Kalz-all a blijjo d'ar vugale dre ma 'z int festus ha pijadurus. Eur rummad-all a blijjo neuze d'ar yaouankizou...

Kaer 'n eus ar galon bezan ter, n'eo ket dizeblant d'ar garante...

Oh! ma soniou karante, ma soniou yaouankizou, nag a bennal pijadur n'am eus ket bet oc'h ober ane!

Nag a wech n'on ket chomet ma unan da hunvreal en-kreiz ar c'hojoun don ha da sklerijen al loar wenn, pe war riblou karet ar mor, o soujal en eun douzig bennak, diwanet du-hout en eun draoniennig a Vreiz!

Ma zoniou karante! Roet o deus d'in levneze ha groet o deus d'in ive skuilh daerou... Ya daerou, rak peurvuian

Dindan eun diavez seder
'Ve kuzet eur galon deuer...

Ouz o leun, pep den yaouank a c'houzanvo alies, oc'h luadveva en e ziaharz meur a bennad eus e yaouankiz, penadour tremenet pell a zo marteze, mes war an tol dihanet ken beo, ma lezfont en e galon, evel pa larfen, eur c'houez-vad amzeriou diagent...

Ouz o leun e laro: « Me ive am eus bet karet! » Hag unanig bennak, dreist ar re-all, a luskello meur a wech he nosvezioù anken hag he foanspered, gant *Glac'har ar Barz* pe *Bleuen an Encor*... Unanig bennag a sonjo alies er *Paourkez dilezet!*

Daouste d'e koulskoude da vezan bet holl gouzanvet ganin, ma *Soniou Yaouankiz* o deus c'hoaz eun digare-all. Groet int eyit rei d'an dud yaouank pedra da gana; rak, evel an evn, an den yaouank a renk kana... Roomp d'ezan eta soniou brezonek, soniou fur ha tener war an dro, hag an den yaouank-ze na breno ken, war varc'hajou ar c'heriou bras, an hanter-kant loustoni, a gav evit daou wenneg etre daouarn gwerzerien Pariz.

Setu aze, ma c'henvroiz ker, gant eun toullad barzonegou dastumet da-man ha du-hout, herve ma redaleannou, an danve gant pelhini ec'h an d'ober *Bleuniou Yaouankiz*. An darvuian eus ma labourioù a zo bet moulet war *Kroaz ar Vretoned*, *l'Electeur des Côtes-du-Nord*, *Ar Vro*, hag all. Dacn-all n'int bet biskoaz moulet. Ober a rin gante eul levr eus ar bravan, gant skeudennou, taolennou ha muzig. Mar kavet kement-se dereat, pegwir adalek bremañ e krogan gant al labour, ho pedan neuze da zigas ho hano d'in ma-unan da Sant-Servez (dre Gallak) pe c'hoaz da Vureo *Kroaz ar Vretoned*. Gant pijadur e tigemerin ho hanoioù ha, mar gallan, n'ho pezo ket a geun.

Tregare diagent ha d'ac'h bepred, ma c'henvroiz ker, a wir galon en doujanz Doue hag en karante Breiz-Izel.

AR YEODET.

MIZ MEURZ

E miz Meurz, glao hag avel foll, A ray lakat evez d'an holl. Meurz a laro gant e vorzioù An ejenn e kornig ar c'hraou. Da zul Bleuniou kanta ar vion, D'ar zul Fask terri o fennou, D'ar C'hazimodo frika ar c'hoz podou. Bleunvi en Ebrel, farmi e Mae, Eus ar re-ze e kargimp hor zae.

J. C.

Kroaz ar Vretoned

KOUVANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broiou estren hag evit ar Broioù keltiek.

BOENEGEUN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag ar feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FUNKZ AN GANT.
Gant brezonek eo deud ar feiz,
Gant ar gallekezañ a Vreiz.
FUNKZ AN GANT.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve troc'het,
Ouspenn ar Yez, e ve Poc'he d'
MILIN.

ALI

Skrivagnerien a zo hag o deus kaset labouriou
da *Groaz ar Vretoned*; trugare d'et Ne vezint ket
souezet, avat, ma ne veint ket moulet raktal, rak
kement a zo, ma ve red mont diouz renk.

Aluzennoù 'vit « Breuriez ar Brezonek »

An otro Rouz, Paris. 20 real.

ALUZENNOU "KROAZ AR VRETONED"

An dimezel Sant-Per. 100 lur.
An otro Rouz. 20 real.

Trugare d'hon mignoned kalonek, d'an dimezel
Sant-Per, ken madeleznus e-kenver hon c'hazeten,
ken karanteznus e-kenver he Bro hag ar Brezonek;
trugare d'an otro Rouz, eur mignon a bell 'zo hag
eur mignon ha n'e ket ankouais.

BREURIEZ AR BREZONEG

N'ankouamp ket, tadou ha mammou, mistri
ha mestrezed-skol, ha kement a zo karget da gelen
ar vugale, eo savet *Breuriez ar Brezonek* 'vit rei
dorn d'ac'h, ha ne goust bean enui nemet
eiz real ar bla.

'Vit ar vugale 9, 10, 11, 12, 13, 14 vla.

'Vit an eiz real-ze, ar bugel, pôtr pe blac'h, an
evo ar gâzeten hep sun;
eur c'haier da zeski skrivan brezoneg;
prijoun eur wech ar bla;
ha lod en ter oferen laket 'vit ar vugale hag o
zud.

Betek breman, aboue an deio diwean a viz
genver, 'zo deut da *Vreuriez ar Brezonek*

KANT PEMP HA TREGONT BUGEL.

Mes dek bugel, d'an nebeutan, 'vije red da
gaout eus pep parouz breton, hag a zo 187 parouz.
N'omp ket dizoc'h c'hoaz. Sikour eta, mar plij!
'Vit ar Vad eo, 'vit Breiz-Izel ha 'vit he bugale!

N. B. — Kas war an dro *hano* ar bugel, e oad,
e *chomaj* hag e *eiz real*.

BREZEL AR MAROK

Meur a hini en-touez hon lennerien a glev
hemde komz eus brezel ar Marok, hep gouzout
kaer petra eo ar brezel-ze hag evit petra ez eo bet
groet.

Evit o sklerijenn, ec'h omp hirie d'ober gant-
se eun tammig kaozeaden diwar-benn ar Marok
ha da lavet d'e an digare a dalc'h er Marok hon
soudarded hag hon martoloded.

Evit-se e renkomp c'hoaz rei bac'hadou da
bôtre ar Gouarnamant. Goulen a reomp eta di-
gare hon lennerien, ha pedi a reomp ané da vezan
madeleznus en hon c'henver. Bezan e vefont; rak
na zrouk-komzomp kamed eus ar Gouarnamant
hep harpan hon lavariou war desteniou sklér.

Da gentan, e fell d'hon lennerien gouzout pe-
nôs ar poblou bihan a zo galvet da vezan debret
gant ar re vras, dreist-holl mar n'o deus doujanz

abed d'o amzer dremenet, na nerz-kalon a-walc'h
evit difenn o histor hag o gwiriou...

Setu, sionaz! ar pez a c'hoarve gant an darn-
vuian eus ar broiou dister. Ar broiou dister a zo
friket dindan seuliou ar poblou krenvoc'h.

Ar vue er bed-man a zo evel-se! Keit ma vo
daou gi hag eun tam askorn, e vo bec'h! Keit ma
vo daou den e vo trouz ha keit ma vo poblou e
vo brezel!

Rak ar brezel n'eo ket, evel ma lar hiniennou,
eun dra hag a dle tec'hel dirak anaoudegez ha
skiant an dud. En tu-hont d'eur walen a gastu,
digaset gant Doue eur wech an amzer da furaat
an dud, ar brezel a zo eun dra red.

P'he deus eur vro re a dud, pa n'hall ken he
bugale beva war he douar, kentoc'h evit mervel
gant an naon, bugale ar vro-ze a glask repu ha
bevanz war douar eur vro all... Tud ar vro-all
n'intentont ket kaer an dra-ze, hag ac'hane e sav
strak... — Evelse e c'hoarvezas gant Japaniz bre-
man 'zo tri bla.

Mes, lezomp ze a goste ha demp d'ar Marok.

Neuze 'la an darnvuian eus ar poblou bihan a
zo dindan treid ar re vras; an darnvuian eus ar
re vras a ra lezen d'ar re vihan.

Evelse hon bro Franz he devoa gwechall gwir-
riou en Douar-Nevez. Ar gwiriou-ze a dalvee kalz
d'imp, rak bep bla millierou ha millierou a var-
toloded a Vreiz-Izel, ac'h e da besketa *morued*
d'an Douar-Nevez.

Bro-Zaoz, bet fin a viskoaz, hag aketusoc'h da
'n em binvikaat evit ar Fransizien, a c'houlennas
bremen 'zo tri bla digant Delcassé, d'ar c'houz-ze
Ministr an Aferou-Diauez (Affaires étrangères),
ober eun tammig marc'had gant hon Gouarna-
mant. Ar marc'had, eme ar Zaozon, a oa eun dro
talvoudus-dreist evidomp... Dre ar marc'had
Bro-Saoz a c'houlle an Douar-Nevez hag an Ejipt;
hag en distro, hi a roje d'imp ar Marok, pe gen-
toc'h, ar gwiriou he devoa war ar Marok...

Hon Gouarnamant genaouerien ha Delcassé,
muioch zoursius da garga o godellou (Bro-Saoz a
roe d'e eun dornad arc'hant) evit da ziwall hon
Bro, a zigemeras ar c'hinnig gant plijadur, a
glouzas hag a zinas ar marc'had.

Setu dilezet ganimp an Ejipt hag an Douar-
Nevez evit... ar Marok; dilezet ganimp an tân
evit ar vogeden!

P'en eur gavchomp er Marok da gemer peurz el
loden roet d'imp eno gant Bro-Saoz, petra a wel-
chomp-ni?

Gwelet a rejomp... pennou Prusianed! ha bras
e oe hon eston o klevet ané o laret, n'hé doa
Bro-Saoz peurz abed, koulz laret, war ar Marok!
Neuze e renkchomp dont a-dreñv pe kavout war
hon fri...

Dont a rejomp a-dreñv ha, kentoc'h evit kavout
war hon fri hag evit plijout d'an Almagn, e teul-
chomp Delcassé er blottou, hag e lakchomp Pi-
chon en e blas.

Aboue 'zo tri bla.

Evidomp da vezan teulet Delcassé er blottou,
ar treo na gerzent ket war eon c'hoaz. Warlerc'h
an Almagn e teuas ar Spagn hag an Itali; int
ive o doa peurz war ar Marok!

Setu adarre muioch nec'het pôtre hon Gouar-
namant diskiant. Kollet o doa an Douar-Nevez,
an Ejipt... Ar Marok oa d'an dud-all... C'hoariet
oa eun dro-louarn d'e gant Bro-Saoz... Red e oa,
en stum pe stum, plenaat an treo...

Neuze an holl vroioù o doa peurz'er Marok,
evit reizha ha dispartia loden pep-hini, a gasas,
pep-hini ané, kannadourien da *Emgleo Algeziras*
(Conférence d'Algésiras).

Eno e oe reizet an treo, hag hon loden, pe gen-
toc'h hon c'hang-ni, Fransizien, rak n'hon doa
loden ebet, e oa ober ar polis er Marok evit ar
broiou-all!

Prest goude *Emgleo Algeziras*, ken mezus evi-
domp, e oe ive lazet er Marok daou dimeus hon
c'henvroiz; ha, herve ar vrud, ar Varokaned a oa
en sell c'hoaz da vuntri ha da chaseal Fransizien-
all.

Red e oa d'hon Bro difenn he bugale. Goulen a
rejomp digant ar *Sultan* pe Gouarnour ar Marok
difenn hon c'henvroiz, kondaoni ar vuntrerien ha
dic'haoui kerent ar re lazet.

Ar Sultan a gasas ac'hanomp da stoupa hag a
reas e fae warnomp ha war hon Gouarnamant.
Ouspenn, ar Varokaned a brezegas dre-holl ar
brezel santel enep d'an diavezourien, dreist-holl
enep d'ar Fransizien; an dispac'h a c'hour-
drouze...

Evel ma oamp, dre *Emgleo Algésiras*, karget
d'ober ar polis, evel ma dlemp, eus eun tu-all,
lakat dic'haoui hon c'henvroiz lazet, setu hon
soudarded partiet da vrezelli d'ar Marok.

Emaiet du-hont eur pevar pe pemp miz a zo
hag elec'h dibuni, ar guden a zeblant luis mui-
ouz-mui. Bezan hon deus du-hont ive eun nebeud
listri-brezel, mes nag hon martoloded, nag hon
soudarded, n'ouzont evit petra ez int kaset d'ar
Marok... Hon Gouarnamant zoken na oar ket
petra a ra du-hont.

Ze na harz ket hon bugale d'ober o dever evel
soudarded ter ha gwir vartoloded; ze na harz
ket ané da ruzia douar gouez ar Marok gant o
gwad yac'h ha birvidik. Brud vad o c'halonder
ac'h a dre-holl...

Poanuis eo koulskoude gwelet bugale kenkouz
o skuilh eur gwad ken mad, evit... Roue ar
Prus, hag evit dic'haoui sotoniou genaouerien evel
Clemenceau, Briand ha kousorted.

N'eus ket c'hoaz pemzek da e kouez 53 war an
dacher a vrezel; 13 lazet ha daou-ugent mac'ha-
gnet! Heplade e vo kaset c'hoaz 3.000 a dud da
Gasablanca, hag ar brezel, sionaz! n'eo ket achu,
na tost da vezan...

En tu-hont d'ar zoudarded, ar vartoloded ive a
bae ker evit brezel ar Marok. Eun daouzek pe
drizek ané o deus kâd eur maro kri, hep brezelli,
lazet gant darvoudou spontus c'hoarvezet war al
listri *Jeanne-d'Arc* ha *Descartes*; hag, evel kus-
tum, en kement-man c'hoaz, bugale hon Breiz-
Izel eo a bae ar gwasan...

Petere gonid a dennfomp-ni, Fransizien eus ar
brezel-ze? — Gonid abed! Mar 'zo gonid da ga-
vout e vo evit ar broiou-all; ha, da c'hortoz, ni a
zispign hon arc'hant hag a skuilh gwellañ gwad
hon bugale.

Setu aze, ma c'henvroiz ker, petra eo brezel ar
Marok.

Gallout a reomp, en gwirione, laret trugare
d'an Troadek, d'Armez ha d'an holl Franmasoned
louz, da vezan gwerzet an Douar-Nevez hag an
Ejipt evit eur zeblant-gwiriou he devoa Bro-Saoz
er Marok... zeblant gwiriou hag a goust d'imp
gwall ger...

AR YEODET.

Eur gouel brezonek en Lomikel-an-Trez

'Vel hon doa lavaret, eur gouel brezonek a zo
bet gret gant Lomikeliz hag o fotred yaouank de-
meurz al lard.

Eur mignon da *Groaz ar Vretoned* o vean 'n
em gavet eno a gas d'imp ar c'helo evellen:

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANC'HOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broiou estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENERJEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Autroun TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GEIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekzoio a Vreiz.
FURNEZ AN GEIZ.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve troc'het,
Ouspren ar Vez, e ve Pec'hed
MILIN.

Aluzennou 'vit « Breuriez ar Brezonek »

An otro Guiltterel.

10 lur.

Pebez eurvad evit bugale Breuriez ar Brezonek gwelent n'int ket ankouet, hag e teu, zoken, ar re o deus o c'homz hag o hano ar muian a bouez, da bleal gante, ha da ginnig d'e donezonou ken madeleuzus.

Trugare a greiz kalon da otro person Gouarec.

AN OTRO DUBOURG en Paris

Gouel Bretoned Pariz, en Iliz ar Galon-sakr, en Montmartre, a zo bet gret disul gant an otro Dubourg, arc'hesbob Roaon. Prezeget an eus en brezonek hag en galleg. Ni zont hon devo hirroc'h hep dale da gontan diwarbenn ar gouel kaer-ze.

AN OTRO DUPARC en Kemper

Dimeurs a oe eun de bras evit Kemperiz : an de-ze o deus digemeret o Eskob neve, gant kalz a enor hag a garante. Bean oa tud en Kemper eus pevar c'horn Breiz. Pevarzek pe bemzek mil den a oa 'vel diruilhet en ker dre bep tu, hag a reas d'an otro Duparc eun digemer henvel ouz hini eur Roue.

Bean oa eiz kant beleg, triugent person ha chaloni, ha tud betek war an toennou. Unan eus dorjoù dero an iliz-veur oe torret gant an dud o voutan.

An otro 'n Eskob an eus komzet en Iliz, lavaret e oa gwestlet e galon hag e vue da gristenien e eskopti : « Vel eur bugel d'ac'h e teuan en ho touez, emean, rak Breton eo evelloc'h ; 'vel eun tad e teuan ive, abalamout d'am c'harg a eskob. Ar gouarnamant an eus 'n em distaget diouz an Iliz ; mes ar bobl a chom bepred unanet ganti.

Dalc'het d'ho Fe, dalc'het da gement a zo mat d'ho Kiziou, d'ho Yez, da skoueriou kaer ho tud koz. »

O vont goude d'e balez, ar muzik o kas anean, an otro 'n Eskob an eus treuzet ker, youc'hadennou o sevel dre holl 'vel eur c'hurun : Bevet Jezuz-Krist ! Bevet an otro Duparc !

Ha breman, pa eo digouet an otro Duparc en eskopti a zo breman e dra, a greiz kalon ni a c'houlennno bennoz Doue ha sent Breiz war e labour, ma vo binniget gante kement mad a deuo eus e zorn.

DA EUL LEANEZ EWIT HE GOUEL

Ho paeron oa eun den a boan,
E di oa distar ha bihan ;
Pinvidikoc'h 'oa koulskoude
Ewit patez ar rouane !

Ele, aleiz endro d'an ti,
Noz de, 'darnije gant dudi,
Rak eno, gant e vam, 'chome
Roue an Ele, mab Doue.

Josef oa sellet 'vel e dad,
Ha Jezuz, 'vel eur bugel mad,
Karantezus, sart ha zeder,
A zente ouz e dad mager.

E kerz Jezuz, 'vel ho paeron.
C'houi 'lak ho nerz hag ho kalon !
Evelloc'h, didrons, tud ho ti
'Glask oll an tu d'Hen serviji.

'Po ket a geun, rak eun devez,
Gant sant Josef, he filhozez,
Evrus emesk he zud koz,
'Venlo Doue er baradoz.

MAB-KAER AN HINI GOZ KEZ

Alies eo bet digouezet d'in komz d'am lennerien eus an dimezellet yaouank a gwita o c'herent evit mont d'ar c'heriou bras ; ken alies-all ive eo digouezet d'in klevet ma Santa Maria diwarbenn ze, rak eur rummad tud na c'houllont ket a-grenn e ve tamallet, en stum abed, ar plac'hig vihan a gwita tad, mam, kerent ha Bro. Kustum da vezan rebechet, ken kustum-all da glevet tud, kalonek a dra zur, mes ive hep anaoudegez, o laret d'in : « Ma, evelkent, Ar Yeodet, tleout rafes lakât eur bannac'h dour en ez kwia... komz a rez eun tammig re c'haro... Ma vefe red d'it testenia da lavariou, marteze en em gavfes nec'het... » kustum eta da glevet seurt pedennou, em c'harg a skrivaniar, me ra nebeud a van eus alion santel tud ken madeleuzus.

O madelez, hep mar abed, a dec'h diouz eur galon eon ha leal ; mes, c'hoaz eur wech, kaer o devo laret ha hadlaret, ober ha dizober, ne lak-fomp biken ebarz ma spered penos an darnvuian eus ar merc'hed, tam muioc'h evit ar bôtred yaouank a gwita o Bro, a zo ebarz ar broiou all skoueriou a zantelez.

Lakomp e teufent abenn, dre eur burzud, da blanta ze em fenn kaled, ar skoueriou a welan kazi bemde dirak ma daoulagad, a lakfe ac'hanon, diwar eur c'houz a ve, da vezan amgred...

Ze na lar ket koulskoude, pell ac'hane, e fellfe d'in lakât en hevelep sac'h an holl verc'hed yaouank ac'h a da Bariz, pe d'ar c'heriou bras all da c'honit o zam bara. En-touez ar re-man a zo Bretoned mad ha tud a galon, na gwitaont Breiz nemed gant ken ; ha, tra ma chouont pell diouz o zud, den n'hall laret an disteran tra diwar benn o bue.

D'ar re-man ec'h a ma gwellan gourc'hemen-nou ; ma 'z eo red d'e kwitad o Bro, da vihanan dre lec'h ma tremenont e lakont karout Breiz ha meuli ar Vretoned... Mes, c'hoaz eun deirved gwech, en-kenver ar re-man a zo eur rum-all ha na gwitaont o zud nemed evit lavout muioc'h a frankiz da heuilh eur vue a zizurz hag a skouer fall.

Den n'halllo ma distaret, rak meur a Bariziane, a Bariziane fur, o deus laret d'in petore bue hudur a rene en Pariz an darnvuian eus hon c'henvroiz. An neb an eus gwelent a asanto ganin ; neb na gred ket n'an eus nemed lenn ar pennad-skrid man, ha m'hen tou d'ezan, e kredo... Rak, a drugare Doue, n'on ket eur gaouiad !

Neuze eta, eur wech oa, eur wech oa ket, hag eur wech e oa bepred.

Eur wech oa eur plac'h yaouank a vro Wened pe Sant-Briek (ne c'houllan ket lakat ar poent war an i), a gwiteas he mam, he zi plouz hag he zraouien didrons hag a yeas da vatez en eun hostaleri vras a Raon, pe a Bariz. Mam an dimezel koant a oa eun devechourez, chomet abred intañvez gant daou pe dri a yugale. Gant poan he diouvec'h e oa dent a-benn da veva ha da rei d'he bugale eun nebeudig diskadurez. Unan ané, an hini henan — lakomp anei Mari, mar karet —

muioc'h futet evit ar re-all, a c'hoanteas mont da Bariz da ziski rodeal, ober arduo-fall ha laret : « Ben sûr, par exemple ! »

Da gentan, marvat, rak ar vam a ziarbenn bec'h bepred, an devechourez a stourmas. Siouaz, dirak komzou flour he merc'h, dirak an daolen gaer displeget eus Pariz gant an dimezel, ar vam a asantas ha Mari-Vrao a frinkas da Ba-a-a-riz evel pa vije krog an Diaoul enni.

Blaveziou a dremené, daou, tri, hag an treo a gerze mad. Mari, livet flourc'h, gwisket kaeroc'h, pintet gwelloc'h, eur vouez d'ei evel hini eur c'haz bihan, arduo fall enni a seurt na oa biskoaz gwelent, a deue da welet he mam gwech ha gwech.

An hini goz, evel just, lore'h enni ken na bade ket, a vije evrus o vont d'an oferu hag o tiskous he merc'h d'an dud. Mari, gant eun toullad girion malet munud, munud, hanter c'hallez ha hanter vrezoneg, a zalude an holl en eur stum fantus. Nebend a dra a ra d'ei a-wechou dianzav zoken he zi plouz... Eun dimezel evelse, ganet, maget ha savet en eul loch plouz!... Trê, lê, lê... Penses-tu!!

Mari eta ac'h e hag a deus. Bep wech e krede d'ei bezan uheloc'h evit he c'henvroiz, evit merc'hed yaouank he farrouz a rene eur vue fur dida-mall pell diouz breinadurez ar c'heriou...

Eun devez dreist ar re-all, eun devez a viz gen-veur diwezan, Mari a deuas adarre d'ar ger, sederoch evit biskoaz.

« Jezus, ma Doue, eme he mam, pegeit e teus da chom ? Marvad an dro-man e chomi ganimp eur pennad... Ma karfes chom er ger ive 'vad... Me, ma flac'hig kez, a ve ken nec'het ganit!... »

« N'ho peus ezom da vezan, zur, eme Vari... An dro-man, e chomin eur pennadig... Dont a refet ganin da Wened pe da Sant-Briek dizadorn kentan ? »

« Ya da zur, ma flac'h, ma ra ze plijadur d'it ; petra 'teus d'ober en Gwened pe en Sant-Briek disadorn ? »

« Gwelent ar marc'had hag an dud zur, ma mam ; 'n em didual eur pennad evel ar re-all... »

D'ar sadorn warlerc'h, Mari-Vrao hag he mam a gemeras an « train », mar plij, a yeas d'ar marc'had hag e tiskenchont o diou en hostaleri 'lec'h ma oan ma-unan.

Evel 'm oa d'ober gant eur Bariziane — ha ma plijont kalz d'in ! — Evel m'aveen histor houman dre eur pôtr yaouank a gouske ive en hostaleri, ha na oa ket eun diavezour evit Mari-Vrao, pegwir hen eo a zigasas anei gantan, e oan evrus o c'hallout ober diwar he fenn-eun tammig stadi.

Netra vevoc'h, en gwirione, evit studia ha gedal taolion lagad daou den yaouank, tra ma tebrer eur pred, Etre eur bannac'h jistr hag eur c'henaouad bara, en eur gomz eus an amzer, ar marc'had, gant eur zell-tro, ne ver ket pell oc'h anveout doare pep-hini.

An dra oa zeul ezetoc'h ma 'm oa klevet gant ar pôtr yaouank, aboue an roz arsak, e tlee e vestrez dont da leian gantan :

« Studiet anei eun tammig, emezan, enpad pred, ha goude e larfet ho sonj d'in... Evidon-me, honnez a zo eur plac'h karantezus, ha sod-nay ez on ganti... Lemmet am eus anei digant he mestrou ha dilezet ma studi abalamour d'ei... N'am eus nemed eur bla wrn-ugent... Mes, kredet ac'hanon, honnez a zo eur plac'h fur ! »

« Kredi ran 'vad, Jakez, dreist-holl p'he deus bet an hardiege — h iplac'h yaouank ! — da zont

LUTHER

O sevel eul lastez relijion nevez en Almagn

Goude beza en em zistaget diouz Rom, Luther a welas darn eus e ziskibien, hag eus e vrasa mignoned o trei kein d'ezan, o kaout eur greden kontrol d'e hini war meur a boent eus e relijion nevez. Kement-se a reas d'ezan kaout outo eur gasoni, eur gouarn ken direiz ma n'helle mui o chouzanv nag a dost, nag a bell. Eus eur perz all, e goustianz a yoa evitan eur bourreo pemdeziek hag e dormante dalc'hmad. Eun dervez, goude koan, Katel Bora ha hen a yoa war ar pourmen. An noz a zeue en he c'haarder : ar stered a oa evel ken alies a lagad aour. Mes evel ma lavar furnez Breiz :

Ar peoc'h d'al laër eo a vank,
Rag pik pe vran diwar ar brank
A glev, a wel, a ziskuilh...
Eur vicher eo leun a drubuilh.

Klevet e oe eta Katel o lavaret da Luther :
— Sellit 'ta na pegen skler ha kaer eo bolz an env !
Luther a zavas e zaoulagad etrezek ar stered.
— Ya, emezan, ar sklerijen-ze a zo dudius,
mes n'eo ket great evidomp-ni.
— Perak 'ta? eme Katel.

Luther a loskas eur glemmaden, eun huanaden glac'harus.
— Marteze, emezan, abalamour m'hon deus kwiteet hor c'houent.
— Mes distrei a c'hellimp, eme Katel.
— Re ziwezat eo, eme Luther ; ar c'harr a zo sanket re zon el lagen.

War gement-se e chenchas kaoz.
Er bloaz 1546, ez eas da Eisleben, e vro, evit unani daou vreur a yoa kalz kasoni etrezo ; mes ne deuas ket abenn. O welet touriou ar ger-ze e semplas, mes dizempla a reas. E kreiz eul lein vras great en e enor gant Protestanted kear, Luther a zavas dioc'h taol evit mont da skriva war moger ar zal ar c'homzou-ma : *Pestis eram vivus, moriens tua mors ero, Papa* ; da laret eo : epad va huez e oan evel ar vosenn evidout, ha va maro a vezo ive da varo, Pab.

An holl a zirollas da c'hoarzin. Kredi a reent, marteze, e oa Luther o skriva setanz ar Pabed, ha ne vije mui Pab ebet goude maro Paul III, neuze war gador Sant Per. En em fazia kalz a reent, rak abaone n'eus ket bet manket a Bab e penn an Iliz Katolik. A ziwar neuze, Luther a gouezas eur bec'h anken warnan hag e teuas e benn da veza tenval. Koulskoude, kemer a reas eun ear laouen, eur wech c'hoaz, da lavaret eo, pa deuas betek ennan ar c'helou e oa maro ar Pab. « Setu aze, emezan, ar pevare Pab a interan ; meur a hini-all a interim c'hoaz. » Mes paour kez profed maleurus, ar c'helou na oa ket gwir ; ar Pab Paul III a oa c'hoaz leun a vuez.

Antronoz, e oe ranket dougen Luther d'e wele, ha dioc'h an noz e varvas e kreiz ar brasa dizesper, evel Judaz. Setu maro tad-koz ar Brotestanted.

KATOLI.

AR SONER

Kentan kamarad am oa bet, (diou wech)
A oa soner, ne ouien ket.
Tam toudiri diri,
Tam tou diri dera,
Tam tou diri deralala.

Kentan 'teuas d'am c'has d'ar ger,
Me na ouien ket 'oa soner.

Gapout ma dorn war e c'hodel,
O santout beg ar gorzunel.

Ha me o c'houlen digantan :
— Piou a labour gant ar re-man ?

— N hini 'labour gant ar re-ze,
A vevo gwreg ha bugale.

N hini 'labour gant benviou
N eus ezom kalz a oustilhou ;

Eun ajini, eun ajinou,
Eun ibilh beuz en e c'henou.

Eur gorzunel 'zo war e skoa,
Diduan 'n dud yaouank a ra.

Dindan e gazel eur sac'h ler,
Gwaskan warnean dre voder.

Dastumet gant L. C.

AL LIN EN BRO-DREGER

Darn eus al labourerien, eur pennad goude ma ve laket o lin ha diwanet, — rak ne chom ket ne-meur en douar, — a wel anean o sevel treut ha stumetfall. Hiniennou neuze 'vije douget da hadan warnan eun tam temz bennak, 'vit e nerzan hag e galetat. Mes n'eus man fallo'h ; elec'h ober vad eo droug a rer d'ar yeoten ; diwar an demz-ze e teu da dognan hag eo koll kalz an hini ra, elec'h gounit.

Awechou-all, eo an drouk-louzo eo a weler o sevel o fri emesk al lin. Ar re-man, avat, ne ve ket fall tognan ane ; mes dies a-walc'h eo mont d'e hep nozout ouz al lin. Bean 'zo ha, gant aon da dennan al lin, a c'houenn al louzo gant beg ar gontel.

'Benn pegoulz e ve dare an est-man? Eun dra a dalvoudegez eo da c'hout, rak lin tennet en e goulz a zo bepred gwel.

Al lin a ve dare ha mat da dennan, pa ve gwelet an deliou o velijenni e traou ar gorzen, hag eul liou alaouret war houman. Kement-man a c'hoarve wardro ar 14 a viz gouere, tri miz hanter bennak goude an hadan. Al lineier laket diwezat a ve an nebeutan amzer en douar. Koulskoude, gwel eo lezel al lin da darevi ervat, evit n'eo tennan anean tam ebet rok e goulz. Pa ve dare kaer, an eve muio'h a bouez.

An devez tennan lin 'zo unan eus an deveziou bras a ve 'pad ar bla en tiegez. Bet 'zo komzet aman gwechall, gant *Ar Mignon*, eus an dennadeg lin, unan eus ar braoan tolennou a zisplegas war *Groaz ar Vretoned*. Dibabet, gant ma refet, amzer vras d'ober al labour-ze, rak ma ve tennet glev, al lin na ogo ket.

Bep ma vo tennet, ra vo ledet tanaoan ma vo gallet, pe warlerc'h an dennerien, pe er prad, — a zo gwelloc'h c'hoaz. — 'Vit astenn al lin ervat, 'zo ezom tri c'hement a douar 'vel ma oa dindanan pa oa 'n e zav. Pa ve laket tano war ar prad pe war ar park e teu d'ogan primoc'h, ha zeul primoc'h, ma ve tanavo'h.

Setu breman eur pleg-all. Pegoulz ve og al lin? Ma ve serret 'rok ma vo og, vo red hadpradan anean ; ma ve re og, e vo gwak ha skanv.

Lin og a zo, da welet, briz evel an aer, ha pa ve kroget ennan ha frotet, e tisilh hag e koue an harra diwarnan.

Eul labourer lin hag an eus eur studi vat war ar vicher ha kalz a skiant-prenan, a lavare d'in :
« D'ar c'houlzioù kentan, emean, ma 'm oa kroget da lakat lin, pa 'm ije c'hoant da c'houzout, dre zur, pe vije og pe ne vije ket, e kemeren ma c'hontel, hag e tremenen diou pe der gorzen war ar c'hein anei ; pa blege al lin, ne vije ket og, pa dorre, vije poent dastum. »

Mes ne ve ket dalc'hmad an amzer diouz dastum al lin, forz na pa ve og. Penos ober neuze?

Sevel anean 'vel ma ve savet an itu. Pa 'n em gavo an treo par, e vo charret, ha ne vo ket bet a goll warnean.

(Da heuilh).

POTRED BREIZ-IZEL

O Breiz-Izel, ma bro, bev bepred dishual,
Gwireo ez out gwasket eun tammig gant Bro-C'hall,
Mes kred penos out Mam da galz a vugale
Ha nan eus ket eur Bobl hag a vefe par d'e.

Ya, ebarz ar vro-man 'zo potred paket start,
Pa vint er pardonioù, ez int laouen ha sart,
Mar renkout, eun devez, mont da stoarm d'ar brezel,
Ar Gall nan eo netra da bôtred Breiz-Izel.

Pa zantont c'houez ar poult oc'h antren en o fri,
Eo poent d'an enebour dihan da emganni,
Pe voint war an dachen, dizale ha 'rok pell,
Holl diskaret a-blad gant pôtrez Breiz-Izel.

Keit ma redo gwad pur ebarz 'n o gwaziou,
Ha keit ha ma vo fe ebarz 'n o c'halonou,
Biken trubard na vo gwelet 'kreiz ar brezel,
Biskoaz trubard n'eus bet eus pôtrez Breiz-Izel.

Epad ma kozefont en yez koz o zadou,
Keit ma teui Brezoneg diwar o muzellou,
'Vit Doue hag o Bro e voint prest da vervel...
O! bevet digabestr, pôtrez ter Breiz-Izel.

Eul Lenner.

EUR PEZ-C'HOARI BREZONEK EN PLOUNERIN

Da veurz al lard e oa jeu ha c'hoari en Lomikel gant an *Otro Keriolet* hag an *Ankel'her*. Disul diwean, ne oa ket ive an holl stad en Pariz ; en Plounerin e oa chomet eun tam bennak anean. Da veurz al lard, « Pôtred Plounerin » a oa et da welet an treo da Lomikel ; chomet e oa digor o geno gante o welet « Paotred Lomikel » o tisplegan an *Otro Keriolet* hag an *Ankel'her*. — « Lesan, eme, ni a raio evellen ive eun dro bennak. » Hag en gwirione, n'int ket bet daleet pell warlerc'h « Paotred Lomikel » ; ha ma vije bet deut ar re-man da Blounerin disul, n'oun ket hag-en ne vije ket bet zavet ar gwad d'o dioukouarn, o welet penos e oa bet displeget *Alanig al Louarn*.

En Plounerin e zo kalz a lann hag a vrag. Awejou, diouz gwelet eur vro fall, e ve c'hoant da laret : « Lesan, ma eo ken fall an dud dre aman evel an douar, ne dle ket bean brao beyan aman. » Me n'avean ket kalz Plounerin ; mes bepred, evit ar wech kentan d'in da welet penos ec'h a an treo ebarz, am eus gwelet mat penos n'a ket an dud diouz ar vro. Ha Pôtred yaouank Plounerin o deus diskwelet mat d'in penos, en bro al lann hag ar brug, e c'halle sevel kalono aour, pôtrez yaouank tom o c'halon, difunet mat evit al labour a dle peb Breizad da ober evit Doue hag ar Vro. Hag e vije bet Paotred kear an de-se en Plounerin, ne vijent ket bet muio'h reiz 'vit displegan ar pez-c'hoari *Alanig al Louarn*. Da heul *Alanig al Louarn*, e oa bet klevet c'hoaz eun nebeut souioù brezonek eus an dibab, evel : *Kan bale Paotred Breiz-Izel*, *Sôn ar Weren*, *Kousk*, *Breiz-Izel*, *Klemm eur bugel*, an *Neuden dorret*, ar *Goulmign*, ar re-man diwean kanet gant merc'hedigoù vihan ken reiz war o jeu, evel o breudeur ennan gant *Alanig al Louarn*.

Pemzek de arók, e oa bet eur « gonferanz » groet gant unan eus ar Bôtred yaouank, war *An amzer goz* hag an amzer a vremen. Ar gonferanz-ze na oa ket bet plijet d'an holl, ha diwar he fenn e oa bet klakennet da vat er barroz. Ne oa ket bet komprenet mat. 'Vit lakat ar sklerijen da baran gwelloc'h war spered ar re 'oa, pemzek de arók, o spered eun denvalijer. (Pera 'oa kaoz, nemet ar weren!) e oa bet hadgret ar « gonferanz », ha diskouezet skleer ha brao d'an dud pera 'zo kiriek, ma n'eman ket an dud hirie, evel gwechall goz, feal da Zoue, d'o Bro ha d'he gizio, « Ar politik », dreist holl, hag ar brezel a rer d'an Iliz, o deus lakat ar mab da zavel a-eneb d'ar dad, ar pried a-eneb d'e bried, ar breur a-eneb d'ar c'hoar. » Hag e sonjen, o chileo, penos ne oa ket memez tra ken fall-ze an treo, o welet pegement a dud yaouank a zo o sevel hirie, evel gwechall-goz o c'hendado, evit difenn o c'hreden, o Bro hag o Gizio, hag evit lakat da baran c'hoaz, a-us d'hon Bro, al Librente pehini a zo « ken dous da galon ar Vreizaded. »

« Enor d'ac'h, Pôtred Plounerin,
» Sturiet gant an otro Kervin,
» War an hent far, war an hent mad,
» Hent ar c'hristen, ar gwir Breizad. »

P. J.

DOARE DA NETAAT AR MANEGOU-LER

Displegit mad ho manegou war eur plat, pe eun dra bennak plean; Raskit saon e dour-tom; ke-meskit ar saon gant an dour e doare da gaout dour-zaon; Trempit en dour-zaon-ze eun tam « flanelle » ha frotit gantan ho manegou ken e veint neat tre; Ledit ho manegou en heol pe dirak eun tan ha ne ro ket re vras grouez, erfin ditirit ha plegit anezo a-rôk ma vezint seac'h-korn hag e kavoc'h ho manegou, er chenta ezom, neat ha soupl, da lakaat.

Roberto.

PENOS ENTENT OUZ AN HARNEZ

Da genta e tleer netaat al ler eus pep sklabez gant eur broust, eur palouer (pe bar-skuber) pe gant eul lienen a zouber en dour, betek ma vo rentet al ler soupl, gwevn. D'an eil, lakaat ouz al ler, a-rôk ma vezo seac'h, eur wiskad eus eur c'hemeski great gant soa hag eol (pe toul) a vo bet lakeet da gemmeski mad war an tan. En doare-ze lerennou an harnez ne vezint ket kalet ha diwallet e vezint eus ar mouelle, al leizder.

DOARE DA NETAAT AR SPOUE

Ar spoue a zastum ker buan ha tra kalz lous-toni hag e rent mastrouilh. Evit e netaat e haller lakaat anezan e tremp er gwinegr epad meur a heur dioc'h-tu. Goude-ze e tleer e zoubha en dour bras, evel en dour-red ha meur a weach, en eur e waska bep tro; mes ar gwella dour evit-ze goude m'eo bet ar spoue e tremp er gwinegr, en an dour bervet.

HISTOR FLANTUS MATELIN

An abarde p'arruas, ar wreg evit kousket Ac'h a 'barz en he gwele, he dor erfad prennet.

— « Bremazon, eme houman, me a raio d'am den, Eur gentel 'vit e dizrei diouz ti an hostizien. »

Wardro unnek eur hanter, e gof karget a win, En eur stad ezuzus meurbed ec'h arru Matelin.

An nor a gavas zerrret, mes dont 'ra da bedi Da gavout ar vadelez da hastan digeri.

— O bremen, eme Janed, pa teus da gof karget, Eñ ti-man, me hen asur, Jenez ne deui ket. »

— « Er poull a zo 'barz ar porz me ya d'an em veui, » — « Mes gant a ri, me houman, et hallfe'n em walc'hi. »

An noz a oa gwall denval; eur c'horf a goue en dour, Hag ar wreg paour spourounet a zilamm da zikour.

Koachet e kiken an nor, Matelin 'ya neuze, Didrousan ma hall monet, da gousket 'n e wele.

Elec'h he fried mevier, e dog hag eur dreujen, Eo ar pezh he deus kavet sanket 'kreiz ar vouilhenn.

En eur gounnar ar vrasan, ar wreg a gerz d'an ti, Mes an nor a zo prennet ha zerrret kloz outi.

Kaer he deus skei ha krijal, Matelin na glev ket, Hag e renk gant kalonad chom ermeaz da gousket.

Ar gentel eus an histor: mar 'c'h eus bet eur mevier, Ne alc'houset ket an nor ken vo arru er ger.

Me ho ped, gwraze yaouank, sonjet en kement-se, Ha chomet, pa vefet et didrousen en ho kwele.

Ar peuc'h en tiegezoa a vezo er vro-man Pa ne vo evit evaj nemet dour da evan.

Dre eno ec'h achuan, rak me 'm eus bet iye Eul loden eus ar strogaj a ve gwazet bomde.

Y.-M. S.

Eun den saveteet e vuez d'ezan gant ar moged butun

Eur c'halz eus an dud o deus klevet hano eus ar baleer bras A. Valley, ginidig a vro-Zaoz; mes, eur c'halz all eus lennerien vad *Kroaz ar Vretoned*, marteze n'ouzont ket kement-man. Eun deiz ead m'oa skwiz bras A. Valley gant an hent, en em lakeas da gousket e disheol eur wezen balmez, e zac'hig beach dindan e benn evel penn-wele. Er broion tom en em gava d'an ampoent. Souden e tihun dre an trouz, ar c'hwiban a ree eun aer bras spontus o tont etrezek ennan. Spontet holl oc'h he gwelet, ne oar petra da zonjal. Prestik e dreid a zo e genou an aneval marnaoniet hag a-nebendou e sant ez a en e c'henou, en e gof evel ma erru er vro-man gant an touzek o vont e kof an aer. Dont a ra sonj d'ezan ez eus eur zigaren hag alumetez en e zac'hig beach. Tenna ra tan ha moged a zeu eus e zigaren. Epad an amzer-ze ar zerpant a gendalc'he d'e lonka, d'e lonka muic'h mui. Setu a-barz ar fin em a zigaren prest da vont e genou ar zerpant da heul ar fumer. Mes ar moged butun na blij ket d'an aneval: skrija a ra, ha pa 'z eo eat en e c'hinou ar zigaren o vogedi, en em gavas gantan evel gant bugale-ze o klask deski butuna; koueza ra klanv betek disteurel hag ar zigaren, hag ar butuner. A. Valley a gendalc'h gwasoc'h eget biskoaz da denna moged eus ar zigaren, hag ar zerpant, donjeret holl ouz ar moged butun, a dec'h kwit gwella ma hell, o lezel ar butuner da achui e zigaren. Saveteet e oa A. Valley dre vertus ar moged butun.

AR REMORS

Brud 'zo dre ar bed eus eur roue eus an Danemark hag en doa lazet e dad evit ren en e leac'h. Seblantout a ree beza dinec'h, eurus. En e balez e vije dalc'had cholori vras: festou en deiz, festou en noz. Koulskoude, kaer en doa, e galon a yoa krignet evel gant eur preon miliget, e spered tenvaleet, enkrezet gant skeudou ankenius a 'n em ziskoueze dirazad pa zonje an nebeuta. Pa zigoueze d'e zaoulagad para war e zaouarn e zeblante d'ezan o gwelet bep wech tachennet a bouladou gwad. Eun abardaez-noz e-kreiz m'edo o tanzal, e zion c'har a vankas d'her souten en e za, e zrem a gemeras liou an ankou hag eus e c'henou e teu en eul tol kont ar griaden: « Lazit ar goulou! » Lazet eo war an heur ar goulou el lampou: ar zal-danz a zo er vrasa tevalijen; mes ne dal ket: er penn pella eus ar zal, ar roue a wel eur sklerijen iskiiz, gwelet a ra o tont a-benn d'ezan eun teuz, daoulagad lugernus en e benn, hag e lavar d'ezan: « Piou out-te, skend, hag a zo bepred war va zro? » Grik ebet! — « Mes daoust ha c'houi eo va zad? » — « Ho tad n'ez oun ket, eme an teuz, Ma vijen bet ho tad, me 'mije roet d'eoc'h pardon. Mes me ne bardonan ket! » — « Piou eta out-te, eme ar roue muntrer? » — « Me eo ar remors! »

ALI

Pedi reomp al lennerien a skriv d'imp, da dol evez mat, pa glizont o lizer, da welet ma na bouez ket ouspenn 15 gram.

Pedi reomp ane ive, ma ne gasont nemet labouriou da coulan, da lezel o lizer disklos, ha da lakat scarnean eun timbr a wenneg hepken.

Hon yalc'hig a glemm pa digoue d'imp renkout paeon d'ar post « surtaxe », 'vit lizerou re bouner.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Brezel ar Maroc. — Dilun diwean 'zo bet adarre kannou er Maroc. Eur zoudard d'imp a zo bet lazat hag eun all tizet.

Kalz a Arabed a zo bet toull-gofet gant klezeier hon zoudarded war beg o fuzuilhou.

Ar revolution en Haiti. — Seiz warnugent a dud eur republik Haiti o vean bet tamallet da glask diskarr ar gouarnamant, a zo bet kemeret da beder eur eus ar beure en o gweleoa, ha kaset ermeaz en noaz da vean fuzuilhet.

Aon a zo ne deufe an dud gwenn — an dud eus hon bro — da vean lazet; an Amerik, Frans, Bro-Saoz, an Almagn, a gas listri brezel da zifenn o zad.

Frans o tiboblan. — En Frans e zo daou-ugent million a dud, hag an eus kresket an dud eus a seiz mil warnugent hepken er bla 1906.

Ar Suiz a zo eur vroig ha n'eus enni nemet tri million hanter a dud, hag an eus kresket an dud eus a seiz mil a daou-ugent ar bla 1906.

Panevert Breiz-Izel, a zo unan eus ar broiou a forniz ar muian a dud war an douar, Frans a yaje war draou kalz primoc'h c'hoaz.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

PEURIT. — Ar presbiter. — Konsailh Peurrit an eus feurmet ar presbiter d'an otro person evit kaot lur, ar priz douget gant ar prefed.

Eun den beuet. — Piriou, hostiz en Peurit, a oa kollet aboue dilun. Kavet eo bet e e gorf maro en stêr ar Jaudy.

PLUDUAL. — Ne oa ket ar gwall-eur o tremen. — Eur plac'h yaouank eus Pludual, Jeanne-Marie Calvez, a oa o tremen eur waz war eur pezh koat lakat d'ober pont, pa dorras heman ganti hag e koueas. Kement a gas a oa gant an dour ken n'hallas, nemet dre chans, kregi en eur bod koat hag a zikouras anei da 'n em denn ermeaz.

EUR C'HELOU MAD!

GRAMMAIRE neve an Aotrou Clerc o tont er-maez eus ar wasg.

Levr neve an Aotrou Clerc a zo achu. Goulennet-han e ti Prud'homme, an nep a fell d'ezan diski skriva reiz. Ar wech kentan e vo komzet aman hiroc'h diwar-benn ar *Grammaire* neve.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

GOULENNIT E Ti-Mouleriez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Aniel katolik, gant an aotrou abad BILAN, goloenn kartouz ha skendou (gant ar frejou-kas),.....	4 real.
Prezegep s'car Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneg.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneg.
Buc sant Anton a Badon.....	5 —
Pedennoù-gôù ha kelennadurez d'ar eugale.....	2 —
Merzoventi an Tad Perboar.....	1 —
Buc an Tad Perboar.....	1 —
Al leaz.....	1 —
Moulodi al labourer.....	1 —
Gwez sant Miltio.....	1 —
Gwez sant Koneri (skendennet).....	1 —
An diaoul-paotr.....	1 —
Kan an Islanded, Kentoc'h mervet. Peden ar vartoloded. Gwez sant Kemo, hag all.....	1 —

Eun diskenn war ar priz evit meur a hini.

Le Gérant : F. GOUYETTER

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANTHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

RENEROEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMMANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoaz en Broiz.
FURNEZ AN GERZ.
Gant brezonek eo doud ar feiz.
Gant ar galloekeriazo a Vreiz.
FURNEZ AN GERZ.

Dalc'hit bepred d'ho pruzoneg
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het.
Ouspenn ar Yez, e ve Pe'he'd!
MILIN.

GOUEL « KEVREDIGEZ BREIZ » e Jugon

Jugon a zo bet dibabet hevlene evit kendalc'h gouarv *Kevedigez Breiz*. Eur gerig koz eo Jugon ha brudet kentan en histor ar vro. Evili ez eo bet savet ar c'hrenlavar-man gant hon tadoù :

Breiz hep Jugon hag he c'hastel,
'Zo eur vantel hep he c'habel.

Ouspenn ma 'z eo brudet. Jugon a zo ens ar c'haeran gant he stankou, he mouden-gastel, hec'h iliz koz hag he zier koz.

Hag o vevan er vro dudiuz-ze tud vad, *Bretoned kalonek ane*, rak evite da vezan bet divrezonekaet gwechall gant an Normaned, ar re-man n'o deus ket gallet diframma diouz o c'halon karante ar Vro. Ya, Jugoniz a zo hag a vo da viken gwir-Vretoned ! Kement-se o deus diskouezet ervad dre an digemer dispar o deus roet d'ar Gevredelerien. D'eze en hano Breiz hon gwellan trugare, hon gwellan menoz !

D'an noz pa oe bet staget gant ar c'hendalc'h er vodadeg kentan er c'ho'h'u, e oe eun dudi evit an holl, e-touez kement a brezegennoù hag a ganaouennoù kaer a oe displeget neuze, selaou komzoù helavar ar barz Abalor, o lakaat dindan an daoulagad, evel en eur meleziour, eun daolen eus histor ar vro. Skoueriusat e oe dreist-oll klozadur e brezegen pa ziskouezas, e-skend Breiz an amzer goz, *Breiz da zont, Breiz an amzer neve*, na hello sevel en he sav ha kerzet, emezan, nemet adlaket e vo bet er renk kentan he fe gristen birvidik, he fardoniou hag he sent koz, he gizioù mad ha santel, nemet graet e vo bet, evel en amzer gwechall, eus an holl Vretoned, pinvidik pe baour, bour'hizien pe gouerriaded, eun tiegez breizad unanet-mad, an holl eunan o lakaat o foan eus o gwella evit *Doue hag ar Vro*.

Heñvez eo mennad ar Gevredelerien (pe réjionalist) a zo en em vodet endro da Gevredigez Breiz. Biskoaz o mennad — a dlefe bezan hinj an holl Vretoned — na oa bet diskleriet ken splan ha ken kalonek ha ma oe en de-se e prezegen Abalor.

Antronoz e oa sul — de an an Aotrou — hag an holl gevredelerien a oa en em vodet-ouz troad an aoter en oferen bred. Ar re ane a oa bet ar gwellan donezonet gant Doue evit c'hoari binviou ha kanan, a fellas d'è lakaat an donezonou-ze da gaerat an oferen. Kanet gant moueziou flour, hon c'hantikon brezonek a dasonaz ganta bolz an iliz, n'he doa ket o c'hlevel aboue amzer sant Konvoion, emichañz. Goude an Aviel e savas aotrou person Jugon er gador hag e ziskouezas pegen red eo evit adsevel ar vuez kristen e Breiz, adsevel spered ar Vro. Anez e teu da zizereza al lianmou a stag ar Vretoned ouz o douar, ouz o iliz, ouz o zud ha ne zaleont ket da vont d'en em goll er c'heriou bras evel plouzennoù war an dour, pe c'hoaz evel eur vag penseset e-kreiz ar mor divent hag a vo hepdale preiz an islonk. Pa labourer, eta, evit silvidigez ar Vro e labourer ive evit silvidigez an eneou. O selaou ouz komzoù ken fur ha ken breizek aotrou person Jugon e seblante d'in selaou ouz unan eus hon sent koz, a vije adsavet eus ar be ha deut da euna e vipien, ar Vretoned, war hent buez ar Vro a vo evite ive hent an Nenvo.

D'an indervez e oe tro ar pez-c'hoari : *Evit*

Breiz, eur pez-c'hoari neve, skrivet a-ratoz evit ar gouel gant an aotrou Tiercelin, ar skrivagner brudet, disket ha c'hoariet gant pôtrez yaouank Jugon dindan renadur o c'hure mad, an aotrou abad Vinçot. Klevet em ens, meur a wech, klemmou diwar-benn peziou-c'hoari 'zo, treut ha digentel, pa ne sav diwarne gonid ebet evit ar spered, skouer vad ebet evit an ene. N'e ket eur pez sort-se eo *Evit Breiz* ha diez e vije, er c'hontrol, kavout eun dra skoueriusoc'h ha bravoc'h evit heman. Tennet eo diwar histor Breiz. Gwiomarc'h, roue Breiz, o vont d'an emganu da zizarbenn enebourien Breiz, a c'halv Nomenoe da vezan roue war e lerc'h, ma tigouezfe d'ezan bezan tizet en emgan. An holl a asant nemet an trubard Gonfred. Heman a vuntur Gwiomarc'h en e dinell hag ar Vretoned, kollet gante o lewier, a zo trec'het. Nomenoe, war ali sant Convoion, a zigemer eus dorn an impalaer Charlez-Veur ar garg a Rener ar Vro evit ar Franked. Gwiomarc'h eus e du a zo dasorc'het (resusitet) gant sant Convoion ha kuzet gantan e-touez e venech'h. Mervel a ra Charlez-Veur ha setu Nomenoe diliam diouz al le a wasonieze en deus ranket ober. Nac'h a ra paean an tailhou hiviziken ha setu brezel ! Adarre e welomp Gonfred, an trubard, o tont da glask muntri roue Breiz evit rei an trec'h d'ar Franked. Pion a gav, avat, war e hent, evit dizarben anezan, nemet ar roue koz Gwiomarc'h en em ziskouez, a-greiz-oll, dirak e zaoulagad, evel eur spez, evit gervel warnan ar binijen dleet d'e dorfed. Dizarbennet Gonfred hag an drubardet, Breiz a zo trec'h hag an holl a gân d'ar Vam-Vro savetaet ha gloaraet bennoz hag eurvad da viken !

Re deut eo an daolen-ze evit rei eun tanva, ha pa ne vije ken, eus ar pez kaer-ze hag eus al laodenedigez e vez heuzet enni kalon eur Breizad keit ha ma pad an arvestou. Mil bennoz-Doue, en hano Breiz, d'an Aotrou Tiercelin en deus savet anezan ha ra skrivo c'hoaz evit enor ha mad hon bro meur a bez evel heñvez ! Goude an oberour, ar gentan meulodi a zo dleet da baotred yaouank Jugon ha d'o rener ken ampart ha gredus, an aotrou abad Vinçot. Setu aman hanoiou ar c'hoari-rierien, hon deus bet ar blijadur da gavout en o zouez daou Vreton a Vreiz-Izel (an daou gentan war ar roll). Eur skouer eo evit en em unvani entre Breiz-Uheliz ha Breiz-Izeliz : *Unvanie a ra ners* ! An aotrou *Gallez* a c'hoarie Nomenoe ; *Intem* a rae Cadiou, ar porcher, ar pôtr fentus ; *Benoit* a oa Guyomarc'h, ar roue koz ; *Gesret* a rae an trubard Gonfred ; *Rouault* an eskob santel Convoyon ; *Pansard* Erispoe, mab Nomenoe ; *Puel* an impalaer ; *Caron* ha *Caresmet* ar vugale. D'an holl ez eo dleet meulodiu, dreist-oll d'ar c'hentan rollou : Guyomarc'h, Convoyon, Nomenoe, Gonfred... hep ankouat ar re-all ! Ra vezo warne holl bennoz Doue ha sent Breiz evit ar boan o deus kemeret da drei ouz hon bro yenniget spered o c'henvroiz ha ra savo kalz a fouez diwar o labour !

C'hoant em bije da gomz c'hoaz eus peur-rest ar gouelioù, dreist-oll eus ar prezegennoù mad a zo bet graet gant eur strollad dibabet a Vretoned a oa bet diredet eno a bevar c'horn a Vreiz, betek a Naoned (Naonediz a oa a-leiz), hag e oa helebini etreze da zével o mouez evit ar Vro... hag ive eus ar c'hanaouennoù, ar zonadegoù, an dansoù breizek, ar prejoù e lec'h e oamp holl evel breudeur a galon. Re hira e vije displega kement-se holl ha koulz eo kloza.

Klozomp, eta, oc'h adskriva eur wech c'hoaz ar reolen a furnez *Unvanie a ra Ners*, a denio da veza, mui-ouz-mui reolen hon emzav breizek. Beteken e oamp unvanet etre Breiz-Izeliz dreist-

oll, setu breman Breiz-uheliz o tont ive davedomp hag i leun a volante vad hag a galon. Eur wech c'hoaz bennoz-Doue d'eze ! Teurvezet en deus hon eskob breizad, an aotrou 'n eskob Duparc, kas da gevredelerien Jugon, e vennoz hag e wellan hetou. Fiziñz hon deus e seveno an Aotrou Doue an hetou-ze o lakaat da ziwana mui-ouz-mui er c'halonou hon c'henvroiz ar c'hoant d'en em unani ha da boanian, dindan banniel herminiget *Kevedigez Breiz*, evit enor ha silvidigez hon mam-vro garet !

Evit-se bezet graet.

Klemmou ha peden eur glanvourez yaouank !

Ton : *Kastibelza*.

O ma Doue, kemeret trus ouzin,
Me a zo klany !
Reit d'in yec'hed e me ho ped, 'wit ma c'hallin,
Arôk an hanv,
Hadvaket c'hoaz al levanez a danva,
Goude klenned,
An den yaouank an neve c'hoant da veza,
Da chom er bed ! (Diou wech).

Nan eus ket c'hoaz 'met eun nebeut klaveziou,
'Boue 'on ganet !
Dec'h 'oan bugel, pell-pell diouzin enkreziou,
Poaniou kalet !
E disheol tour iliz ma farouz am eus
Kresket eurus !
Herie an de, gant ar c'hlenved am eus reuz,
Reuz ankenius !

Ha koulskoude e oa digor ma c'halon,
Ha digor frank,
D'ar garante ken birvidik, ken gwirion,
En dud yaouank !
O, ya, em c'breiz, em c'halong, o toman,
Me a zante
An dra gaeran 'c'heller kat en douar-man :
Ar garante !

N'on ket ganet en eur c'hastel alaouret ;
Ze na harz ket,
'Nevou Doue ma lodan d'in-me roet,
Pa oan ganet !
Eun tiig koant, ha kerent eus ar gwellan,
Nerz ha gened !
Pendra 'walc'h da gât war an douar-man,
Evarusied !

Renket am oa pellât diouz ti ma c'herant,
Poanian da vad,
E-touez an dud, bevan ha gouzout ma hent
Dibab dalc'hmad !
Bete vremen, ma renken 'wechou c'houezan,
Me 'diskwize,
Ha ne oa ket evarusoc'h er bed-man
Ewidon-me !

Breman, sionaz, ma dioujed a zo koac'het,
'Meus ken a ners !
Evit louzoù, anchant gant poan goneet,
Ac'h a em c'herz !
No gouskan ken, hir e kavan hep nozvez !
Pegouls eta
Ec'h hallin c'hoaz 'vel arôk, e tiegez,
Sevel kenta !

Pa deuy an heol da strinka waromp tamder,
Eus an oablou,
Ha pa grego an evned 'tontez ar girjer
D'ober nejou,
N'hallan kredi ne deufen ket me ive
C'hoaz da gresvat,
Ha da c'hallout, goude ma c'hlenved, Doue
Trugarekât !

N'ankoent ket pegen dister eo an den,
Ar c'hrena da den !
E damm yec'hed 'zo diwar bouez eun neuden,
Ha netra ken !
O ma Doue, yac'h pe glany, evel breman,
Me a laro :
Ho potante bezet gret en douar-man,
'Vel en Nenvo !

X...

Bugale « Breuriez ar Brezoneg » a skrivo ar
pez-man war o c'halerou 'vit miz meur.

KOMZOU EUR BREIZAD

An divroadegez. — Ar Breizad en e vro. — Ar Breizad divroet. — Isonkou. — Buez ar Vretoned e Paris. — Sklavet ar Barizianed. — Petra d'ober evit diarbenn an divroadegez gouli Breiz? — Ar skolioù eneb Breiz. — Karrantez ar vro.

N'eus gouli ebet gwasoc'h eget an divroadegez evit hor gouenn vreizad. Hag abalamour da ze ivez ar vroadeleorien vreizad a wel gant esllam ar gouli-ze o kreski bemdez. Niverusaat a ra atao bemdez ar Vretoned a gwita o farrez goz, o c'herent, o mignoned, evit mont da glask o chanz d'ar c'hearion bras.

Ar Breizad, en e vro, a zo, peurliesha, eun den a vuez direbech; karout a ra e vro, e relijion, e wiskamant breizad, e c'hiziu koz. Mes eur wech ma sav d'e beun eur stullen froudenus bennak hag her pouz warzu ar c'hearion, e weler, a nebeudon, o vihanat en e galon ar garantez evit e vro, evit e relijion, evit e holl gustumou broadel. Eur wech kwitaet Breiz gantan, e lezo a-gostez pep karantez evit douar e gavel; n'ez ay morse war-dro beleg nag iliz, nag oferen, ma ne gav unan bennak war e hent d'e gentelia, d'e gennerza dre e lavarion. N'eus ket ezom da lavaret e tilezo raktal e wiskamant, rak devet e vefe gant ar vez ma rankfe ober eur gammed dre ruiou Paris, pe leac'h-all, gant gwiskamant Breiz war e chouk. Lakaomp e kendalc'hfe ar Breizad, kwitaet gantan e vro, da heuilh e gustumou koz, e relijion, e-mesk paotred ar c'hearion hag a zo tud direljion, an darn vuia anezo. Gwapaet e vo ganto, ha buhan e teuo da drei kein d'e holl gredennoù ha d'ar pez a gare kent. Ar Breizad a zo aonik, hag a bleg dirak an holl.

Ar c'hearion a zo evel islonkou foillet dre ar meaziou, islonkou hag a gresk bemdez, hep elhan, diwar goust ar meaziou tro-dro. Lonka reont bemdez eur maread a goueriated hag a zo kollet evit atao, eur wech kouezet enno. An darn vrasa n'ouzont ket peseurt toullon fall eo ar c'hearion; mes kredi reont e vez kavet eno arc'hant hag aour da zastum a grabanajou. War zigarez dastum arc'hant ha dont da veza pinvidien, eo ez a eta hor c'houneriated keiz d'ar c'hearion. Mes na pebez distro lous en em gav ganto, pa ne gavont, e leac'h arc'hant ha pinvidigez, nemet naon ha mizer!

Arabad eta kredi eo avius stad ar Vretoned hag ar Bretoned divroet ar c'hearion bras. Pell ac'hano! Tud bet e Paris a lavar peseurt buez trist ha gwalleurus a ren ar Vretoned e labourioù ar gearben. Petra 'ra ar Vretoned divroet e Paris? N'eo ket aotronien eo 'z int, arabad d'eo c'h kredi. Al labourioù an dieasa eo 'vez roet d'ezo d'ober, al labourioù han e vez ket kavet a re-all d'ober anezo. Hag hor c'henvroiz paour, tud aonik ma 'z int, a ra pep labour a galon vat, n'eus forz pegen fall e ve.

Ar plac'bed yaouank, ken eürus war ar meaziou, en o bro Breiz, a ya, en eur zenti eus ar frouden savet d'o fenn, da glask gwalleur ha naonegez d'ar c'hearion. Er gear ez oant dishual; hag e Paris, o servicia « Madamou » ar gear vreine-ze, ar merc'bed yaouank n'o deus mui tam frankiz ebet: labourat a rankont noz-deiz hag a laz-korf, ha brao d'ezo pa c'hellont kaout eur bevans dereat evit o digoll eus o foan. Pebez kemm, evit ar Vretoned hag ar Bretoned, etre ar beva e Breiz hag e Paris! Nag a bed o deus keuz d'o bro ha d'o meaziou, eur wech m'o deus tremenet eun nebeut miziu er c'hearion bras! Nag a bed a garfe dizrei raktal da gaout o c'herent, o mignoned hag o mignonezed, da Vreiz; mes nag a bed n'hellont ket dont hag a jom da « grewi » e Paris ebarz ar vrasa dienez!

(Da heuilh).

Joseb AR BRAS,
« Dirlem ».

Istor gweledigeziou an Itron-Varia en Lourd

Ar 24 a viz c'hoveurer, an « Itron » en em diskouezas adarre da Vernadet. An de-se e lavaras d'ei, etre ter gwech:

— Pinijen! Pinijen! Pinijen!
Bernadet a droas warzu an dud en eur ouelan hag o lavaret ive: Pinijen! Pinijen! Pinijen!
An de warlerc'h e c'hoarvezas eur burzud neve hag a reas da gentan da gradi da galz e oa kollet he spered gant ar plac'hig.
Laret he devoa an hanter eus he chapelad

dirak an « Itron », pa zavas gant eun er nec'het. Ober reas diou pe der gammed tresk ar ster, ha poz, 'n eur zellet war he lec'h, 'vel pa vije bet unan bennak o c'hervel anei. Eur pennad e chomas 'vel da chileo, hag o vean asantet dre zin, e troas warzu ar mene hag ar rechel. Poz a reas adarre, goude eur pennadig kerzet, 'vel da glevet ali an Itron. Kerket goude e taoulina hag e reas eun tammig toull en douar gant he bizied. An toull-ze 'oe raktal karget a zour; evan reas ha 'n em walc'hi; eur yeuten a droc'has ive da chakat.

An dud souezet bras a oa manet da zellet, kas intent petra oa a neve gant Bernadet. Mes pa weljont anei o sevel, eun tam yeod en ha geno hag he dioujod mastaret gant ar fank, ar memes gir a deuas gante holl:

— Ar paour kez Bernadet a zo dent sodi...
Bernadet a dizroas d'he flas, hep ober van ebet, 'vel pa n'he dije ket klevet pesort trouz a oa gant an dud, hag a hadkrogas gant he feden.

Dont a rejod da c'houlen diganti, pa oe tec'het an « Itron » ha perak oa bet o fiskrapat an douar e harz ar mene:

— Pa oan o pedi, emei, an Itron he deus lavaret d'in: « Et d'ar feunteun da evan ha da 'n em walc'hi 'Vel ne welen feunteun ebet, e sonjis mont d'ar stêr. Mes an « Itron » a c'halvas ac'hano hag a ziskoneas d'in gant he biz pelec'h am oa da vont; senti 'ris, ha koulskoude ne welen taken dour ebet. Neuze e teuas em spered toullan gant ma biz ha raktal e savas andon. Pa 'n evoc gret eur sklera, en em walc'his hag ec'h evis.


Ar vammen-man, strinket dre an toull a reas Bernadet gant he biz a zalc'has da rei dour. Kalz a dud a gasas gante, an de kentan, tammou douar distremptet gant an dour-ze o sevel; mes 'benn an de warlerc'h, an dour a blome ken teo hag ar biz; 'benn tri pe bevar de oa deut ken ted hag ar vrec'h. Hirie e rent, bep daouzek eur, tringent mil litrad dour, da laret eo daou c'hant dek ha tringent barriken dour bemde, ha biskoaz nan eo et da hesk.

En dour-ze, hag a zired dre bemzek kanol, e ve gwalc'het ar glavvourien a den da Lourd, dre vilieron, da glask hag alies, da gerc'hat ar yec'hed.

(Da heuilh).

BRO AR ROZENNO

Henvelekaet diouz ar Saozneg



Pell a-chan eur vro zo, Leun a re-zen-no



Lec'h e - ma pep an-ken, An-kouet da vi-ken;




Eu koa - jou glas be-pred, Ka - na 'ra 'nev-ned,



Di - wan ra 'n pep an-zer, Bleu-niou di - ni-ver,



Si-quaz, e - vit mont di, An hent a zo kri,




Ha n'eus e - vit por-zer, 'Met an Ankou ter,




Mes, 'pad o hun, eun el, d'ar vu - ga - li - gon,




Dam-zi-gor an no-riou... Kousk 'ta, ma lu - gol,




Pell a-chan, eur vro 'zo,




Leun a rozenno,



Lec'h e ma pep anken



Ankouet da vilen;



En koaz glas bepred,



Kaus 'ra 'n evned,



Diwan ra 'n pep amzer

Bleunioù diwv'er.

DISKAN

Si-quaz, evit mont di,
An hent a zo kri,
Ha n'eus, evit porzer,
'Met an Ankou ter,
'Mes, 'pad o hun, eun el,
D'ar vugadigou,
Dam-zi-gor an no-riou...
Kousk 'ta, ma hagel.

Aze 'kav ar mammou
O Jugaligou,
Digante diframmet,
Gant 'n Ankou kalet,
O kana dudius,
Kouat ha lugernus,
Kuzet kreiz ar bleunioù,
'Vel lapousigou.

Aze, ken a washer,
Sioul, diwreder,
E komz ar Gellied
En o yez karet,
Barzed, sent, da vilen,
'N o dorn eun delen,
En yez o c'haval,
A gán Breiz-Izel.

GWELTAS.

TOL-ESA WAR BUE SENT BREIZ

Sant Konwoion, abad kouent Redon (800-868)

An abad Konwoion hon c'has
d'ho kavet 'vit ho pedi da
viret d'ean al lec'h an eus
dibabet da bedi Doue evit
d'oc'h hag evit Breiz-Izel.

(Komzou Lumbemel, diskiht
Konwoion, da Nomenoe).

Goude, an den-man a gontas d'ar venec'h e istor.

— Ni, emean, 'zo tudjentil a renk uhel, hag a lazaz hon eotr hag hon breur evit kreski hon madou. Barnet 'oemp neuze gant an Eskibien hag ar roue Lotêr d'ober, keit ma karje Doue, eur binijen gale: houarnet e oemp, evel ma welat, ha kaset da bedi da veion ar zeut. Bet omp diou wech en Rom hag en Jeruzalem, bet omp en Ejipt hag en Afrik; skuilhet hon deus hon gwad, hon daerou hag hon fedennou war gement hent a zo er bed. O tremen en Roaon evit dont aman, ma breur a zo bet lakat fin d'e binijen gant dorn Doue. Pegoulz e vin me ive galvet da gwitat ar vue pe da gwitat ma chadennoù?

Ar pelerin 'n em strinkas, en eur ouelan, dirak relegou sant Marcellin, hag ar venec'h a unanas a greiz kalon o feden gant e hini. Kelo ebet na deuas d'e e oant chilaouet.

An den-man a zontas mont adarre en hent tresk Rom; mes ne oa ket et a-bell eus an abati, pa glevas eur vouez hag a c'houre'hemenne d'ean dizrei da Roton. Setu hen o tont war e giz.

Mont a reas, an noz warlerc'h, da glevet ofis ar venec'h er chapel, hag e vanas kousket. E-kreiz e gousk, e welas eur beleg skedus ha lugernus o tostet outan; stokan 'reas e viz ouz e chadennoù hag o zorri ken e kouejont war leuren ven an iliz. An drouz a zihunas anean; mes o sevel 'n e zav, e loskas eur griaden. Pare 'oa, ne oa ken a houarn warnean.

Eur c'hantik a drugare a oe kanet raktal gant an holl venec'h, hag an torfetour pardonet a unanas e zaerou gant mouez o feden. Ne daleas ket pell er gouent; kaer 'oe feden warnean, abenn tri de en em lakas en hent da vont da Rom.

Konwoion ha Nomenoe oa laket o-daou war an douar 'vit 'n em harpan an eil egile. Lqret an doktored seurt a garfont, red eo anzav penôs, dre volante Doue, da vihanan, ma n'e ket dre o bolante o-unan, Konwoion ha Nomenoe o deus 'n em zikouret 'vel daou vreur da zavel stal Breiz-Izel. Ber ha berr, bet int, d'ar mare ma vevant, daou zorn Doue o peurachui hon Bro.

Aboue ma oa tapet gantan grasou mat an impalaer, an abad Konwoion a veve didrous. Setu ma teuas fro Nomenoe da vean nec'het. An impalaer koz a varvas. Nomenoe a reas ar pez a oa en e sonj 'boue pell zo, torri ar chadennoù oa bet laket gant ar C'hallaoued war izili ar Vretoned. E holl studi e oa ober gant Breiz-Izel eur rouantelez. Konwoion an evoc stouvet gant e vanati ar fregaden gret gant ar C'hallaoued da zont war ar Vretoned. Nomenoe a renka breman peurglozan al labour ha skarzan ar C'hallaoued a oa er vro. Ar pep gwasan a chome d'ober.

Hep dale, oe laket dir en avel eus a bep koste; Bretoned Nomenoe ha Gallaoued Charlez Ar Moal, mab an impalaer Louis, a reas meur a grog. Gant ar Vretoned e teuas an trec'h.

(Da heuilh)

AR RELIJION KATOLIK HAG AR VIBL

Ar Vibl pe ar Bibl, (Bible, e galleg, Biblia, e latin), eo levr ar Skriturioù-Zakr, an Testamant koz hag an Testamant nevez asambles, al levrioù-zantel. Hogen, ar pezh a ziskouez, eme ar Brotestanted, n'eo ket an Iliz katolik gwir Iliz Jezuz-Krist, eo ma ne fell ket d'ezhi rei digemer d'ar Bibl.

Pebez gaou bras ha pebez fallagriez eus o ferz! Digant piou, mar plij, o deus bet Luther hag ar Brotestanted-all levr ar Bibl, ma n'eo ket digant an Iliz katolik ez eo? Piou, nemet an Iliz katolik an eus diwalet al levr santel-ze ha miret outan da veza devot, "distrujet pe kollet e kreiz an dispac'h hag an dismantr spontas a zo bet ken alies war an douar? Piou a ziskouez karantez ha doajans evitau, evel n'eo dleet da gomzou Doue? Piou a dol evez warnan, evit ne vezo na herruet, nag astennet, na cheuchet eur gomz emman, hag hen mir evel eun tenzor a briz uhel, ma n'eo ket an Iliz katolik? Pebez merkou kaer a respet a ro houma d'ezan! En oferen-bred, an Aviel, hag a zo eul loden eas ar Bibl, a vez kanet a vouez uhel, hag an-holl en o zav; ar beleg a ezans al levr, en eur gomans, hag a dok d'ezan, en eur achui. Ar beleg en em vag bemdez gant komzou Doue, o lakaat anezo da vont don en e spered hag en e galon, evit ma hello goude-ze o ranna etre ar gristenien fidel ha rei da bep hini, hervez e skiant hag e wiziegezh. En e brezegennou, ne ra netra ken nemet poania da rei komzou Doue da entent d'an holl, hag alies e lavar, ger evit ger, ar c'homzou skrivet el Levrioù-Zantel.

Mes setu ama penôs emañ ar gont : ar Brotestanted n'o deus nemet al lizeren vut eus ar Bibl, hag al lizeren-ze a ro d'ezo töl ar maro; elec'h ar gristenien katolik o deus ar spered, da lavaret eo, ar gwir ententamant eus al lizeren-ze, eus komzou ar Skritur-Zakr, hag a ro d'ezo, dre-ze, ar vuez, rak : « Al lizeren a laz; ar spered, avat, a ro buez. » (II Kor, chapistr II, artikl 6).

Taolomp evez, lennarien; Jezuz-Krist n'en deus ket lavaret d'e Ebestel : It dre ar bed-holl da gas Bibl d'an dud da lenn. Lavaret en deus : It, kalennit an holl boblou, deskit d'ezo ar pezh am eus ma desket d'ac'h va-unan. Evelse, eun hag eun, eo a ra ar beleg katolik. Poania a ra, da genta, da studia dindan mistri desket bras war ar Skritur-Zakr evit kompren mat komzou Doue, ha pegement hennak a spered hag a zeskadurezh a hello da gaout, n'y ket, evel ar Brotestanted, da glask entent pep tra gant e benn e-unan. Nan, gwelet a raio, er c'hontrol, ar pisa ma hello, petra o deus bet sonjet ha lavaret a-viskoaz, diwarbenn ar c'homzou-ze, an doktored vrasa eus an Iliz; gwelet a raio, ouспен, petra an eus diskleriet war ar poent-ma-ar-poent hag embannet da gredi hor mam santel an Iliz he-unan. Ha da c'houde, ez ay abeurz Doue hag e liz da brezeg an Aviel d'an dud. Evelse a ree an Ebestel pa oant o prezeg lezen Jezuz-Krist; evelse eo en deus Jezuz lavaret ober.

KATOLI.

WAR HENT AR BARADOZ

Salud, o Kampostal... porz-mor bro an Envou!
Salud, eun ar c'hvas, magerz ineon;
'Lech eurus a ziskuz, d'hoñ bagig roit goudor,
D'ar heajour brevet, eo han' Doue, digor!

Pegen frealzus eo, en hon amzerioù, gwelet ez eus c'hoaz, en hon bro garet Breiz-Izel, tud kalonek a-walc'h evit trec'h war gwaparez ar bed ha diskoune emaint int bepred gwir soudarded an Otrou Doue!

Hirie, mui evit biskoaz, eo red kavet nerz-kalon hag eur gouraj dreist evit kenderc'hel da stourm evit ar Vad, en eur vro, en behini an estren, skoazellet gant trubarded, o deus touet diskar relijion hon Salver Jezuz-Krist. P'an eo ken tenn ha ken skwizus ar stourmad, eo red da bep tro kwitat ar park a vrezel ha klask eul lec'hig distro evit diskwizan.

Ni, da vihanen, Bretoned Kerne, ni hon deus kavet al lec'h-ze a diskwiz, kavet hon deus ar vammenn a zigas adarre ar vuez hanter-varo. O pegen evurus e oamp oll o kwitat evit eun nebeut devezioù ar bed trompluz, ar bed leun a dru-

builhon hag a devalijen evit 'n em zastum en t-treted Kampostal en ker Rostren!

Pa weler evelse tud a bep stad, pemou-tiegaz, labourerien ha micherourien o tilezel o labourioù hag o zud evit zoursial hepken eus o zilvidigez, e c'heller laeret gant fiziauz :

« Goude eur c'houk hira emaint breman d'houe;
'Ch aflan o c'heze 'klevan ar Vretoned,
O gwad hirvidik bepred, o fannou en avel,
E tifennont o fe, Doue hag o banniel! »

Ya, bean 'zo c'hoaz en Breiz, konz ha gwechall, tud hag a gar bepred an Iliz Santel, hon Mamm; laouen e skuilhfont o gwad eviti! Mes petra? Goude eur tredit evel an hini grot en Rostren, an devezioù tremenet, daoust ha ne zeufe ket hon stad war wellat?... N'eus war ar bed levenez ebet par da evursted an hini an eve tremenet eun nebeudig devezioù evelse, en eur gont, o pleal gant aferioù e zilvidigez Gant pebez nerz-kalon e leu, goude-ze, da drec'h war an trubuilhoù hep niver a digoue gantan a-hed ar vuez reuzidik-man. A! Breiziz, ma breudeur, ha c'honi, dreist-oll barzel, d'ac'h e lavaran ar giori-man : « Mar fell d'imp e chomo Breiz en he zav; mar karomp c'hoaz fe hon zud koz, mar fell d'imp e ve unvaniez ha karante etre ar gerent hag ar vugale, n'hon deus netra a zies d'ober, d'arvoudi ar Retrejoù; hommez eo ar feson man asur da hadsevel banniel ar groaz en hon bro Breiz. »
Alian a ran kement hini a lenno ar pennad man da ober eur tredit en a vuez, ha ma zent ar Vretoned ouz ma mouez, ma 'lavar difazi :

Breiz a hadsavo en he lufz gwechall.

Bet am eus kalz a evursted epad devezioù ar tredit, rak ouспен ar grasou an eus bet digant an Otrou Doue, am eus bet ar joa d'ober anaoudegezh gant Herri Pourc'hiet, eus Maël, eur mignon kalonek da Groaz ar Vretoned. Bean eo eur skouer evit ar pemou-tiegaz, dre an urz vat dalc'hel gantan en e di. Doue an eus beniget e diegezh, o rei d'ean eur verc'h leanez.

Pep tra a oa a-du ganimp; bean hon devoa evit prezegerien an ootroun Péc'hous, rener ar tredit, person Plusquellec, person Plougerneve, eil person Plusulien. Fell a ra d'in trugarekât ane eus ar boan o deus lakel ganimp.

Trugare ive d'ar veleien yaouank, n'o deus ket espernet o foan evit hon diduan epad an diskwizadennou.

Bennoz Doue d'al leanezed santel o deus prederiet ouzimp epad an deio benniget-man. Eun dra gaer eo ive gwelet pebez karante a stag kalonou ar re a ve er tredit; eno, tud reuzidik ha mac'haget a gav sikour digant an oll.

Oh! dere hel a refomp soñj penôs ar gwellan loden da ginnig d'ar re a oa chomet er ger eo ar skouer vat! Bezomp eta evel abostoled neve; difennomp ar wirione dre oll, hep d'antant, hag evelse, bepred er rouden vat, marteze unan pe unan o heuilh ar menez gwenojen en hon goude, en em gavo evit mat war hent ar baradoz!

PEN-BRETON.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Eur stal arc'hant et a-blad — C'hoarvezet 'zo diun diwean eur gwall dol en Pariz. Eur marc'hador arc'hant pe eur « banquier » hanvet Rochette an eus renket lezel e stal, hag ec'h a da goll war e lerc'h 200 milion, kant evit Pariz, ha kant 'vit ar peurest eus Frans.

Rochette a zo breman er prison. Mes goude bean laeret kement a dud, — sonjet hag a diegezh a vo rivinet, pan eo ken bras ar c'holl, — ne zebiant ket bean gwall-vec'hel.

Rochette n'an eus nemet tregont vta; bet e oa perukener, d'an oad a seitek, trivec'h bla.

Ac'hane eo et da laer ha da laer bras.

Labourerien Frans. — Strollad pe « syndicat » Labourerien Frans 'n em vodet en Pariz, evel ma ra eur wech ar bla, an eus goulnetet.

Ma ne vije ket votet an « impôt sur le revenu »; ha ma vije dizammet al labourerien douar en eur vilhanaat ar fréjoù hanter-diner hag en eur vagan nebeutoch a vevelien e servij ar gouarnamant.

Setu eno, a dra zur, hag a vije kalz gwelloc'h evit al labourer 'vit ne vo lezen nevez ar c'hoattributionou.

Brezel ar Maroc. — Betek an de kentan a viz meurz hon deus dispignet 22 milion er Maroc, gant ar brezel.

Naontek ha pevar-ugent a zoudarded a zo bet lazet, ha 311 a zo bet gwall dizet.

Ha 'vit goumit petra?

Meot an dud hag o bevans. — En Norvej, eur vro hag a zo euni tud eus ar re gaeran, 'zo bet tolet ple penôs, e tro hanter-kant vta, ment an dud an eus kresket eus a bevar sentimetr. Breman 'zo hanter-kant vta, an dud yaouank a dape, well waz, eur metr pemp ha tri-ugent sentimetr.

Er broyoù all, emañ kont memez tra : korf an dud a ra war uhelaat.

'Vel eur blantenn hag a zav seul-uheloc'h m'he deve muioc'h a demz, korf an den a gresk ive seul-kaeroch ma ve gwelloc'h maget, hag ar bevans a zo gwellaet dre holl aboue hanter-kant vta.

Eur barrad glao du. — Peurvuian ar glao 'n eve liou ebet, peotramant ne vije ket brao bean tapet dindan hep disc'haver.

En Iverzon, koulskoude, 'zo kouezet an deouman eur barrad glao du hag an eus lakel an dud da 'n em zeigi.

Herve, eur goumoulen huel ha glaou-douar, o tout eus Bro-Gymru, a oa bet tapet etre an douar hag eur goumoulen c'hlae, hag he devoa evelse lakel liou ar c'hianyou war ar vro dre holl 'lec'h ma oa tremenet.

EUL LEVR "PIPI GONTO" NEVE

Marvailhoù Pipi Gonto a zo gverzet 'boue pell 'zo ar mil aneas a oa bet moulllet.

C'hoant d'ean da lakat dre skouer al lezennou grammair gret gant an otro Clerc, c'hoant d'ean ive da gaout en yez Tregar eul levr marc'had-mat, E Ar Moal an eus moulllet eul levr neve Pipi Gonto, marvailhoù emañ pen-da-ben dishenvel diouz ar re a oa el levr-all.

Prest e vo al levr-man da werzan, dindan pemzek de ha ne gousto ket e tu-hout da 6 real, 'n eur gontan ar fréjoù kas. Koulskoude brasoc'h vo 'vit Pipi Gonto kentan.

Kavet vo warnan ive an emgleo bet gret etre ar skrivagnerien gant o zinou.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

GWENGAMP. — Tân-gwall. — An tan a zo kroget disador, wardro ter eur, en eur pezh lejez d'eur miliner-lin, an otro Goulin. Kement a oa er c'harti a zo bet devet ha dreist-oll, eur stal vras a liz bet klenket er beure-ze.

LOUANNEC. — Krouget. — Jean-Mari Gallan, oajet a 80 vta, a zo 'n em grouget en e bark. Dispartiet e oa eus e wreg hag an dizesper a vo bet kroget emman.

LANUON. — Tapet gant e gar. — Fransez Tanguy, eus Berhet, hag e verc'h vihan seiz vta, a oa o tremen en gwatur war leurg-ger Lanuon, pa spontas an aneval. Ar bugel n'an evoe droug ebet, mes an tad a oe diskaret ha gwall-dizet.

GOULENNIT

E Ti-Mouleraz Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an ootrou abad BLEEN, gobonn kartoz ha skouennou (gant ar fréjoù-kas).....	4 real.
Prezegenn vuez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneg.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneg.
Buc sant Anton a Badou.....	5
Pedennoùigou ha kelennadurez d'ar vugale.....	2
Merzerenti an Tad Perboar.....	1
Buc an Tad Perboar.....	1
Al lez.....	1
Meulodi al labourer.....	1
Gwerz sant Mili.....	1
Gwerz sant Koveri (skouennet).....	1
An diaoul-paotr.....	1
Kin an Islandad. Kemloch mervet. Peden ar vortolodet. Gwerz sant Kema, hag all.....	1

Eun diskenn war ar priz evit meur a hini.

LAPOUS GALL HA FRANMASON!

« Ar pezh 'zo haos eo diwezhat ar Vretoned hag e chomont goue ha berr a spered o dre ne ana-vezont nemet eur yez, ar Brezoneg, eur yez divalo ha dister hennez, mar 'zo unan. Ar pezh 'zo haos e chomont dindan domani an tammigou tudjentil hag ar veleien, eo dre ma 'z int goue ha berr a spered.

Pa 'n em reont Gallaoued, neuze e teu spered d'e.

Er skotiou, mistri-shol Frans a zo paecet gant ar c'hant Frans evit deski d'ar vugale ar galleg ha nan ar brezoneg.

Ma vezfe eur Breton hag a skriv en galleg petra eo eur yez, ne larfe ket eo eun dra talvoudus deski ar galleg dre ar brezoneg.

Ar Brezoneg n'eo 'met eur yez a renk izel hag ar galleg a zo eur gwir yez. N'e ket memez tra.

Talvoudus a hall bean studi diou yez par an eil d'eben. Mes tud nay, evel ar Vretoned o chom el lenneier, pa 'n em gaont dirak diou yez ken-veur-ouez-hennev, e tibabont an hini disteran, ar Brezoneg, hag ar Bretoneg a ra gant o bugale tud imobu.

Ar pezh 'zo haos d'e da chom breton, eo dre n'o deus darempredet biskoaz nemet ar yez-se. Mes ar Breton, — an nep un eus baleet a oar se, — 'zo pell, o ya, a dra zur! da vean sellet dre holl evel eun den 'vel 'zo dieet.

En eur c'haron, pa gaver eun den dizesk, diwezhat ha lous, eur Breton e ve. »

An hini a skriv ar c'homzou-man en e gazetenn a zo bet badeet, mes nac'het an eus pep relijion, ha n'an eus ken relijion ebet. Evitan n'eus na Doue, na bro, na lezen... Gant se, ne vo den anwazet ebet o klevet anean o vallozi war ar Vretoned, o yez, o c'hredennou koz.

Ha neuze, ézet eo goût, eun den a boell hag a spered na skriv ket treo evellen. Komzou evellen n'hallont koueant nemet eus geno eun den klanv gant eur c'hofad kasoni, ha prest a-walc'h e lavared d'ean : Ma 'peus drouk-kof, kemeret eur vaz haleg...

A dra zur, klenvejon seurt gant heman n'o deus louzou ebet nemet ar vaz.

An otro-man, Boyer a rer anean, n'e bet biskoaz yac'h ouz ar Vretoned hag ar Brezoneg. Ar Vretoned a zo c'hoaz, a drugare Doue, eur bobl yac'h a gorf hag a galon ; forz pegen digouezet int, e kichen ar seurt gant an otro-man, eur Breton a zo eun den leun a boell, a spered hag a lealded.

Pa digoueas en Breiz o tout eus koste ar C'hreiste, e vanas gantan e c'heno war c'houec'h eur, o welet eo aman tud hag a yez d'an oferen, a grede en Doue, o welet ne oa anaveet aman, koulz lavaret, nag an interamanchou laik nag an divorz.

Kroui 'reas eur gazetenn, hag eno, bep sun, en em lakas da zislonka war ar veleien, bep seurt lous-toni, peadra da rukuni eur pennozh. Goude-ze, e koueas war ar Vretoned. Ped ha ped gwech an eus lavaret d'e oant tud lous, tud berwel, tud sod... Kaer 'oa lavaret d'ean sellet outan e-unan ; arabad 'oa d'ean ober eur zell war e du dre, rak 'boue pell 'zo, allas, al louarn a zo dilostet !...

Ar pezh a skrive dirion diwean en e gazetenn a zo henvel-beo outan, n'an eus na penn na lost keennebeut.

Evit an distoladen-man ha n'an eus biskoaz gouveet yez ebet, nemet hini ar furlukined hag an tennerien-dent, ar Brezoneg n'e ket eur yez. Eus a belec'h 'n eus desket an dra-ze, pa ne oar ger Brezoneg ebet? Pelec'h an eus klevet pe leunet ze, pa 'zo en Roaon, en Pariz, en Berlin, en Londrez, en Amerik, tud eus an desketan hag a lak ar gwellan eus o amzer da studian ar Brezoneg hag ar yezou keltiek?

An dibater-man, dife ha digreden, a lavar eo pennasket ar Vretoned gant an noblans hag ar veleien. Gwelloc'h e vije gantan gwelet en hon goue ar gorden a zo en e hini, hag eman krog an diaoul er penn anei.

An oprater-man a lavar eo trec'h ar galleg d'ar Brezoneg. Ar Brezoneg, emean, 'zo eur yez diweat, ar galleg eur yez abred. N'eus yez ebet abred na yez ebet diwezat, ha mar zo, n'e ket ar Brezoneg. Labourer ho park hag e tolo freuz, labourer ho yez hag e kresko, hag e vleunio. Gant se, ar gwellan doare da zeski ar galleg eo mont d'ean dre ar brezoneg, dre ar yez a anaveer ; hag eun doare mat da greski anaoudegezh ar brezoneg, eo lakat anean kenver-ouez-hennev gant ar galleg.

An dra-ze 'zo ken skler hag an heol da greiste ; mes petra fell d'ac'h da rei da welet d'eun dall?

Hag an otro-man a zo dall put : e gasoni ouz ar relijion a zo, 'vel eur goumouien, etre ar golo hag hen.

Pa vo sellet piz ha tost, ar c'hantard-man na ra forz ebet pe eo divalo ar Brezoneg pe n'eo ket ; pe eo mat deski galleg ha Brezoneg a gevred, pe n'eo ket ; pe eo trec'h ar galleg d'ar Brezoneg pe n'eo ket ; mes ar Brezoneg a zo eur zikour, eur skoazel, eun harp evit ar fe hag ar relijion ; eur vagor eo, hag ouz ar vein-ze e tazon e zent ; eur gled eo ha war ar gled-ze e chom e fri ; kaer 'n eus tourtal, gwinkal, touet-Doue ha mallozi, ar vagor na ra van ebet, ar gled na finv ket, ha kaer 'n eus, zoken, skei gant e bigel, ar vagor na fiach tam, ha pa zell pegen uhel eo, ha pa glev du-hout, adré, mouez ar bobl hag ar veleien o kanaan menlodi da Doue o zadou, ha trouz o zreid o kerzet en rouden ar re goz, e krog ennan barradon kounnar ken e venn foeltri.

Neuze e skriv : Ar Vretoned 'zo lous ! Ar Brezoneg a zo eur yez divalo !...

Lezomp ar Boyer da 'n em chakat ouz troad ar vagor !... Ni, breman, tennoomp eus kement-man eur gentel.

Aman, kaeroc'h 'vit biskoaz, ni a hall lavaret :

Ar Brezoneg hag ar Feiz
A zo breur ha c'hoar en Breiz.

Bezot sur penos an de ma loskaf ar Vretoned o fe hag o c'hizion kristen, an de-ze an nep a lavar hirie : Ar Brezoneg a zo eur yez divalo, — a lavarfe neuze : Ar Brezoneg a zo kentan yez 'zo war an douar. Mes petra deufe neuze ar Brezoneg da vean? Neuze, en gwirione, eo e tenfe da goac'han, da voevni ha da vreinan. Ine ar Vretoned eo ar Brezoneg, mes ine ar Brezoneg eo ar Fe. An dra-ze 'zo ken gwir, eo ar Fe hag ar Relijion ine ar yezou, ma weler ar galleg o tigouean hirie, ken mesket ha ken distumet ma 'n eus ken tres a van ebet en geno pobl ar c'hérian.

Ma 'zo den ebet barrek d'ober gaon ouz ar Vretoned hag o yez, d'ober gante tud dispered, divalo ha goue, eo ar seurt gant an otro Boyer.

DIR NA-DOR.

BLAZ AR JISTR !..

(Trede Pennad)

D'am mignon, an abad J.-L. Prigent.

Ema sko er menhir : n'eus mui nemet eur c'hammed bennak da vuzula, hag e vezo en em dennet kwit dibikous !

Mes, siouaz Doue! epad ma tiskane « Tran lar di reno », da vihana evit ar seitekved gwech warn-ugent, poulodefez ! setu Herve Stroallek a stok-korf o vuzula an dachen, hag e fri tougn oc'h arat douar kerkoulz eget soe'h an alar : ha gwasa ma zo, kement-se hep d'ezan gouzout netrakrenn. « Savomp adarre, emezan, abarz koueza mui ! » Ya! mes eur zamm iskis a bouez war e ziouskoaz, hag e rank chomm da bokat d'an douar. Drog ennan, e tiswink muioc'h-mui ; mes diou c'har dir a zo skoulmet endro d'e c'houzoug ken en deus poan dihalana, hag eur c'hoz vouezig a gomz outan, lemm ha roe'hellus egiz rojou « Karrig an Anhou » o wigoura epad an nozvezion goanv :

— Petra, mignon Herve, penos c'hoantat tremen abiou d'am zi hep dont da lakat eur c'hornadig butun gant ar C'horrig?

— Va buez? N'am lazit ket ! Va buez!

— Laza ac'harout, mignon paour, an dra-ze n'ema ket ebarz. Bezomp mignoned kentoc'h, petra 'lavarez?

— Oh! ya, Gwerc'hez, Santez Anna, maeronez va gwreg! Lezit ac'hanon, aotrou Korrig, mall eo ganin distroi da gaout va gwreg...

... Evit larda anezi gant trojen ar skubelen? Evit digas d'ezhi muioc'h a c'hoant kousket?

— Va buez! Forz va buez! Ne rin ken!

— Gwaz aze neuze, rak ar gwraez o deus oll ezomm da danva allies, gant o choug, blaz ar geundenen...

Me ne ran ket forz, mes en abardaez-man eo du va fenn : deus ganin d'am zi, hag e konti d'in kontadennou mam-goz d'am diskwiza !

Ar C'horrig a lammus en eur berniad douar-goz, a frankeas an toull, hag a sachas Herve baour, diwar bouez e vleo, ken ne zigonezas e kreiz ar menhir !...

Aotrou Doue! Biskoaz kement-all a binvidigez na lugernas dirak daoulagad Herve Stroallek! Ar mogerion oa goloet gant peziou aour ha mein fin, bep eil renkad ; hag al leur-zi oa great gant peziou ugent real ; war an daol, goloet gant eun daol, eun doucher bilhoji-bank hag ar c'hant-paper, e oa eur varikennad gwinn-ardant ; ar sklerfien a deus en ti n'ouzon kalz mui dre belec'h an tanfoeltri... Herve Stroallek a joume sebazet oll.

— Diwall da laerez netra! eme ar C'horrig.

— Aoun ebet da gaout, eme Herve ; biskoaz n'am eus laeret talvoudegezh eur spilhen...

— Hag ar jistr laeret bremaik diwar da verour?

— Hema a oar pep tra, a gredas ar mezhier.

— Alo! mignon, kan d'in ar zon a deus ganit bremaik.

— Nan! n'ouzon ket kana! eme Herve, droug ennan.

— Nan? N'ouzes ket? Ma! en em denn ac'han, mar gellez.

Ken buhan, an noz a deuas en ti, epad ma tis-korde ar C'horrig kriz da c'hoarzin. Herve a ya d'ar vogar, a c'hoari an dro d'ezhi : mes poan gollet ; n'eus toull dor ebet, ha kaer en deus troi ha distroi, ne gav digor ebet. Skwizet o klask, e kouez d'an douar, haunter-varo, epad ma klev ar C'horrig digalon o c'hoarzin gwap !...

...

Antronoz vintin, Herve Stroallek a oa gwall nec'het, pa zihunas en e wele-kloz, ebarz Kerdeek :

« Ha koulskoude, emezan, n'eo ket hunvreal am eus great : nan, rak droug am eus c'hoaz em bleo, hag em divesker... Aotrou Doue!... Hag ar C'horrig?...

— Petra? mezhier, gourlancher frank, lonk-ezizun, koll-bara, dic'houilhez, dreb-spered, torpenn? N'out ket eat c'hoaz d'ar bed-all, ampre-fan? Hag eur c'hristen a dife distaga korfajou evelse?

E wreg eo a gomze d'ezan en doare-ze, en eur welet anezan o tigeri e zaonlagad ker frank egiz m'en dije bet c'hoant da zibri yod-kerc'h pe gram-poez ganto.

Kerkent e teuas en ti Jermen an Troadek, an deveziour koz, bet o voueta ar c'hezeg.

— Ac'hanta, eme an deveziour, en eur c'hoarzin, paneve me, Herve, e vijes bet c'hoaz du-ze etal menhir « Toull ar C'horrig. »

— Ya, eme ar wreg, peched eo bet d'eoec'h koll hoc'h amzer da zigas an toull-jistr-ze d'ar gear dec'h d'an noz.

— Ma! eme Jermen, poan a-walc'h am oa bet gantan, kement am oa goust da c'hoarzin.

— Ha koulskoude ne oa ket peadra, eme Herve.

— Eo da! Red e vije bet d'eoec'h beza bet o welet anezan o troi endro d'ar menhir, o klask tremen dreizan...

— Tremen dre ar penlvann?

— Ya... hag o youc'h a-bouez-penn e oa klozet ebarz gant ar C'horrig !!!

...

Herve Stroallek a zistagas c'hoaz eur pennadig kousket. Pa zavas, e oa dizonet e hunvreal gantan : n'en doa mui souj, zoken, pe vlaz oa gant jistr e verour Gwilhou Tortik-kamm, e Kermoal du-ze, en tu-all da « Lanneg Toull ar C'horrig. »

EOSTIK KERINEK.

Eur C'helou mad

GRAMMAIRE neves an Aotrou Clerc o tont er-maez eus ar wasg.

Levr neves an aotrou Clerc a zo schu. Goulennehan e ti Prud'homme, an nep a fell d'ezan diski skriva reiz. Ar zan a deus e vo komzet aman hirroc'h diwar-benn ar Grammaire neves.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANTHOÙ

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall,
2 skodev evit ar broioù estren hag evit ar Broioù Keltiek.

RENERIEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

JEHANNOU-KONVREZ

An Aotrou TOSWELLES, 27, ball Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoaz en Breiz.
FERNÉZ AR GIZ.
Gant brezonek eo douet ar feiz.
Gant ar gallegizao a Vreiz.
FERNÉZ AR GIZ.

Dalc'hit bayred d'ha prezonieg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'hoù.
Goupen ar Voz, e ve Tre'hed
MIZ.

Eur yezadur pe « grammaire » en yez Treger

KENTAN PENNAD

Da bep bro, Gwened, Treger, Leon, he yezadur. — Ar Brezoneg na ei war rök nemet ha studiet va da gentan yez pep terouer, Gwened, Treger, Leon, Kerne. — An tri yez, goude 'n em dshant-valout, a dle chom unanet. — Febra eo yezadur an O. Clerc.

N'ouzon ket hag-en an Dregeriaded a zo kement a lod'h eune 'vel ma tlefe bean. Aboue n'ouñ ped kant via, e haller lavaret ne oa ket bet skrivet, kanet, lennet brezoneg Treger evel m'eo breman. Kroaz ar Vretoned, o ren treman dek via 'so, zo skrivet gant Tregeriaded ha lennet gant Tregeriaded, 'vit al loden vrasañ: Breuriez ar Brezoneg zo zavet 'vit an Dregeriaded hag he deus troet dija kalz a vogale war studi ar Brezoneg. Mes evit harpañ mat eur yez, n'e ket ar breuriezou hag ar chazeteou eo c'hoaz ar gwellañ. Da diazezan eur yez, 'vel ma zo dleet, an daou ven eo ar yezadur (grammaire) hag ar geriadur (dictionnaire), daou levr hag eman enne lezen ha tensor ar yez.

Penaos e oa savet Kalvar kaer Plougastell

(Eil bennad)

Breizh, bugareuz e-kentaer
ar breton: ar garantez a
zistad, gatis an d'haouarn; roet
ou deus e'char e falc'ho
sonj vat ene eur breveunad
zour roet en e'han.

Ar bugel en doa komzet a oa eur pötr bihan koant a zeg vloaz pe war-dro, daoulagad buzek o lugerni en e beun. Dispontet e oa bet, kredabl eo, o klevet an demezel o koms gant kement a reizid; savet e oa war ar c'hleuz hag e tene da rei dour d'ez.

— « O tra! eme ar veajourez, ne glaskomp ober droug da zen ebet. C'hoant hon deus hepken da c'hoazout ha pell emañomp c'hoaz dioc'h Kemperle, ha gallout a rafemp ive kaout ana eun nebeut bevans. Ezom bras hon deus, hex sur, va foatrig. »

— « Bevans? eme ar bugel oc'h heja e beun, diez e vezo rei d'eo'h, mestouet! N'eus ket c'hoaz peup dervez ez eus bet skrab warnomp. Kredi rau ne vezo kavet en hon tiez-soul netra nemet maruze eun tamm bara du bennak ha leaz. »

— « Ni a raio gant ar pezh a vezo, mignon bihan, a lavaras an itron yaouank. Kea, mar plij, da lavaret da dud ar gear-ma n'o deus tam ezom ebet da gaout aon, hag e paemp gant largentez ar pezh a c'houlennomp. »

Pae! setu aze eur gomz ha n'oa ket bet klevet e Kloc'harz pell a yoa; setu perak ar bugel a oe mall gantan mont, leun a fouge, d'han lavaret da dud kear.

E keit-se, holl dud ar gompagnunez a ziskenuas diwar varc'h. Mez bezomp anezo eur pennad da ziskounza, ha gwelomp piou eo an demezel-ze emaint ouz he heul.

Thereza a Blougastell e oa he hano. He zud a yoa brudet kaer. He zad, aotrou ha baron a Blougastell, a Zaoulaz, hag a n'ousped leac'h-all c'hoaz, en doa kalz a binvidigezioù. Ober a rea avat implij kaer gant an douezou-ze roet d'ezan gant Doue, ha Thereza, e benherez, a lakae he foan da gerzet war e roudou. Ar plac'hig yaouank

Ma n'hon deus ket c'hoaz hon geriadur d'imp hon unan, setu d'imp breman eur yezadur.

Lezen yez Treger a zo breman etre hon daouarn, skrivet war he hed, sklér ha reiz, gant eun aked, eur furez hag eur wiziagez dispar.

Bet e oa, atök heman, leviou-all eveltan skrivet 'vit ar Vretoned; mes, dizampled e oant da zeski, o veat ma oant pe re verr, pe re vesket enne an eil yez gant egile, pe skrivet an eur mare ha ne oa ket c'hoaz anaoudegez awal'h evit dibab ha merkan sklér ha rik pep reolen.

An O. Clerc, evel ma lavar en kentskrud e levr, an eus gonaet o tont warlerc'h. Evel ma tigoue en pep doare skiant, an diwaan a c'hone, rak ar freuz dastumet en e rök a zo holl etre e zaoarn hag a ra kalz ampled d'ean war e labour. Mes dies eo c'hoaz ober impli vat gant kalz a zanve; red eo kaout eur spered leun hag aketus evit ober eun dra vat gant daou mat ha fall mesk-mesk. 'Vit pezh a zell labour an O. Clerc, dreist-holl, bean 'n avoa da ziwall ouz daou si :

Töl plé ne raje eul labour re dregeriad; töl plé ne raje eul labour re vreton.

Kement-mañ 'a eus ezom da vean diskleriet mat.

Yez Treger n'eo nemet eul loden, eur rann eus ar Brezoneg; nag en Gwened, nag en Leon, nag en Kerne ne ve komzet yez Treger, ha koulskoude 've komzet Brezoneg

Yezou Treger, Leon, Kerne, Gwened, a zo 'vel

a dremenas deizioù seder betek an oad a zeg vloaz, e Plougastell, dindan lagad he zad; hogen, neuze, siouaz! e kollas he mamm, hag eur pennad goude he zad a yeas eus ar ger n'ouied ket evit pegit, evit atao maruze! Ar biron a yoa eat a-da gant Charles Blaz, ha brema ez ea da dapa e zoudarded evit brezelekaat ganto.

Chomet he-unan er maner, Thereza a glaskas he flijadur oc'h ober c'hoaz muioch a vad evit diaraok.

Beva a reas evel-se epad c'hoaz-hi vloaz dindan kulotioez eun den mat meurbed en em roet holl d'an tiegezh. Ne jomme ganti evit beza eürus nemet kaout kelou aliesoc'h eus he zad ker. Hogen, ken diez ez oa d'an ampoent kas kelaier ma n'oa ket leac'h da veza souezet o veza ne deus kelou ebet d'ar gear a-berz baron Plougastell. He c'halon a c'hrouzave ar verzerenti, ha koulskoude e chomme sioul.

— « Lakeat em eus va zad, a lavare hi, dindan gward Ronanez an neuvoù, hag hep douetans ebet e tizroio d'ar gear. » Hag e klaske, da c'headal, dougen an dud da garet muioch-mui he zi.

Eun dervez ma 'z oa daou-bleget oc'h eur prenestr, he daoulagad o para war mor Beest, hag hi ha gwelot eur manac'h baleer en e zav e-kichen dor ar voger, o c'houlent dont er c'hastell. Evit doare n'oad ket ne'chet gant mont da zigeri d'ezan.

Hag ar plac'h ha gervel an hini en doa da welet war an ti, ha goulent digantan petra rea na lezed ket ar manac'h da zont betek ar ti.

— « Demezel, emezan, n'em eus nep fizianz er rederien-vo; souldarded aotrou Laveoug, enebour touet ho tad, a ya hag a deu dre ar vro. Aon em eus rak o zroioù-kuz, hag ar manac'h baleer-ze n'en deus stum vat ebet gant e zellou faeüs hag e zoareon prestet. Me laka eo eur spier, ha netra ken. »

— « Mont a ran da welet va-unan », eme ar plac'h yaouank o sevel.

Mont a reas, evel m'he devoa lavaret, betek dor ar porz, ha dre doull barrennet an draf a yoa euni e c'houlennas digant ar pech'heri petra rea d'ezan kaout kement a c'hoant da vont er c'hastell.

— « Eur c'halon eus ar re vrasa, demezel, a zigasau d'eo'h, hag ouspenn-ze, skouiz maro ou

peder gwrien pe pevar brank d'ar ween hag ar ween eo ar brezoneg.

An aviell a lar : ar brank disklonset na vevo ket. Evelse e c'hoarvezfe gant forz pelhini eus ar pevar rann yez, ma tenfent da 'n em zistagan eus ar c'hef breton; mont a rafent da fall.

Yez Treger, merket d'ean e reolennoù diwaroan e-unan, hep zellet ouz ar yezou-all, a de'he tam ha tam digant ar Brezoneg, hag a deufe da vean eur yez kollet; war digare lakat anean war e dra e-unan, e vefe dispariet diouz ar re-all; ha gout a ref, ma eo gwir unvaniez a ra nerz, diwar disunvaniez ha dispariet n'eus nemet seupladurez, koll, dienez, psourante.

Haslomp lavaret, bihan ha bihan, penos an O. Clerc, daoust d'ean da vean gret eur yezadur dregeriad, oa arabad d'ean ankout eo yez treger eur yez breton hag a dle hale dour ouz dora, skoa ouz skoa, gant an tri yez-all, breudeur d'ean.

Hen e-unan a skriv : « Al levr-mañ, emean, zo 'vel eur pont da vont eus a Dreged da Wened, rak kemeret eo ar skouer anean diwar Yezadur an otrone Ar Gô ha Guillecic, kam e halian lavaret zo padra el levr-mañ da rei da intent ar pep diezan eus yez Gwened. »

Setu eno penos an eus an O. Clerc aïret an unvaniez etre yez Treger hag e vreudeur, ar yezou-all brezonek, rak ma eo kerent yez Gwened ha Treger en e levr, a dra zui, Leon ha Treger, Treger ha Kerne, ken hevel an eil ouz egile, a vo tostoc'h c'hoaz.

ive. Klevet em eus bet lavaret n'ousped gwelc' ez eo an itron eus a Blougastell meurbed karantezus. N'hen diskouez ket nemet, dra va feiz, p'eo gwir e ra d'in gedal keit-all e-tal an nor-ma. »

Ar rebech a yeas war-eün betek kalon Thereza, hag e roas urz da zigemeret ar beachour ha d'ober brao d'ezan, daoust da lavarou ar gouarnour.

Araok dibit eur c'hinaouad eus ar pezh a giniget d'ezan, ar beachour a c'houlennas ober e gefridi dioc'htu.

— « Ho tad, emezan da Dhereza, a zo er prison eun tachad a zo, klozet en unan eus tourioù Henbont. Her gwelot em eus eno. E vrasa tristidigez e vezo mervel hep beza ho priate. »

— « Mervel? » a c'houlennas an demezel.

— « Ya, siouaz? Er c'hrograd diweza, a zo bet etre souldarded Monfort ha re Vlez, eo bet gwall-c'hizet, ha n'en deus fizianz ebet da barea. Kargst ou gantou da lavaret d'eo'h n'en deus ket trement eun dervez hep kaout sonj ac'ha-noch; pedi a ra ac'ha-noch da renta honor d'ezan dirak an dud o kemeret skouer dioutan, o vale war e roudou. »

Kalon Thereza a vennas rauna o klevet eur seurt kelou. Ne falgalonas ket evelato. Mont a reas d'he c'hambri, hag e tastumas he braoigou, he ar'hant ha kement en doa eun dalvoudegezh vras. Hag e c'halvas a-nevez an hini a yoa karget da ziouall ar c'hastell. Rei a reas urz d'ezan da lakaat dindan an armoù kement a dud hag a vije ezom evit he difen eus a Blougastell da Henbont. Dioc'htu, emezi, edo o vont.

— « N'hellit ket ober-ze! eme Bol, n'ouzo'h ket, demezel, pegement a riskl a zo evit ar beachour dre eun amzer evel-hen. N'hellit ket mont, e koustians. »

— « Ma, mont a rin koulskoude, eme ar plac'h yaouank. Doue hag ar Verc'hez an diwalo a bep droug. Na fell ket d'in e varve va zad araok m'am bezo e welet. »

Kement a lavaras Pol evit esa he distrei diouz he mennoz na dalvezas da netra. O veza fiziet pep tra e Pol, ar c'hastell, an douarou, al leveou, Thereza a ouie e c'helle kaout fizians ennan, hag ez eaz en hent en diez-se zoken.

(Da heuilh).

KLAODA.

KOMZOU EUR BREIZAD

EIL PENNAD

An divroadegezh. — Ar Breizad en o vro. — Ar Breizad divroet. — Istonkou. — Buez ar Vretoned e Pariz. — Sklavet ar Barizianed. — Petra d'ober evit diarbenn an divroadegezh, gouli Breiz? — Ar skolioù eneb Breiz. — Karterez ar vro.

Unanik bennak, evelat, eus hor c'henvroiz a c'hell tapa leac'hioù mat e Pariz: mes nebeut a zo anezo, ha n'eo ket dienas o niveri. War gant eus hor c'henvroiz, ped a c'hell en em zével e kargou enorabl, e Pariz? N'eo ket adarre dienas o niveri! Muio'h a achu o buez en naonegezh eget a ya da vervel er paleziou.

Brao c'hoaz pa n'ez a ket hor c'henvroiz ker, sklaved ar Barizianed, d'en em lakaat etouez an « apached », padred ar « gontilli-eün », pa ne gavont mui a labour da implija o nerz. Hag hor plac'hed ysouank, gwerc'hezad Breiz! Mont a reont, lod anezo, da greski an niver eus ar merc'hed a red ruiou Pariz o stleja o enor ebarz ar vouilhenn hag ar fank, evit mont da achui barz ar vrasa dienez, dilezet gant an holl. Doanuis eo an holl draou-ze, mes ar wirionez eo!

Petra 'zo kiriek d'an divroadegezh-ze, brasa gouli hor gouenn? Ha petra 'zo ar gwella d'ober evit miret ouz ar gouli da greski mui en amzer da zont?

War an daou dra-ze e lavarin va zont didroïdel, en despet d'an dud a gavo abeg ennan. Ar pezh a zo bet hag a zo bepred ar penn-abeg d'an divroadegezh eo, da genta, ar skoll!

Ya, ar skolioù divrezonek eo ar c'henta penn-abeg eus an divroadegezh, abalamour n'oar ket bet en em gemeret, betek-hen, mat a-walc'h enno. Evit deski d'ar vugale yaonank a tleont chom en o bro. Daoust hag o komz fall eus Breiz, eus he yez hag he gizioù eo e lakeor ar vugale d'en em staga ouz o bro? Mat! setu, koulskoude, ar pezh 'zo bet great hag a rear atao e skolioù divrezonek a zo.

E Breiz hon deus gwelset an deiz: war he douar eo hon deus great hor c'hammejout kenta. War douar Breiz o deus bevet hor c'hentadon, a remzi da remzi, hag eviti o deus skuilhet o gwad. E douar Breiz euan eskern hon tud maro hag a zo bet gwechall, marteze, difennourien o bro, o yez, hag o gizioù evel-domp-ni breman. *Breiz eo eta hor bro genta!* ar vro a dleomp da garet dreist pep tra abalamour ma 'z eo bro hor c'havel.

Mes, allaz! e Breiz ne vez ket desket d'hor bugale e tleont karet o bro, ne vez ket desket d'ezo he histor gaer, ken kaer hag histor Bro-Frans, histor e brezelioù, histor he duked, histor he zad brudet. Ne vez desket seurt eus an dra-ze d'ar vugale, ha koulskoude kement-se a lakafe anezo da zongen karantez da Vreiz, pa ouezfent pegen kaer eo bet a holl-viskoaz Breiz e-mesk an holl vroioù-all.

Yez Breiz, ar Brezoneg, a zo kaer ive, kant gwec'h kaeroc'h eget ar galleg, evel ma 'z eo eun tam mat kosoc'h ive egetan. Yez ar Breizad eo, ar yez a gar ar muia! Mes er skolioù, ar vistri, dallet gant n'ouzon pesurt kounnar direiz a enep hor yez, na gavont nemet pep tra fall da lavaret anezan d'ar vugale vreizad. En eur lakaat hor bugale da anaout ha da garet o yez koz, e c'hellfed, koulskoude, eas, delc'her anezo stag ouz douar Breiz, e leac'h ma konzer ar Brezoneg, ha miret evelse outo da vont da goll d'ar c'hearioù bras leun a vrejnadurez.

Gizioù, kustumoù ha gwiskamant ar vro n'o deus ket, kennebeut, an eur da blijout da loden eus ar vistri-skol ha, koulskoude, netra braoc'h na gav an estranjourien a deu da welet hor bro. Red e ve eta o deic'hel en o zav ploum, ha lakaat hor bugale d'o dougen atao hag e pep leac'h.

En eur ger, lennerien ker, mar hon deus c'hoant delc'hel ar Vretoned en o bro, lakeomp en o c'halon *karantez evit Breiz*, dreist-holl, hag ivez evit he yez, he gizioù hag he gwiskamanchou. Netra gwelloc'h evit staga ar Breizad ouz douar e gavel!...

Joseb AR BRAS,
a Dirlenn.

Darn komzou ententet fall gant ar Brotestanted evel e c'hoarvez ganto re allies

Kredi a-walc'h a rafen ez eus kalz Protestanted ha ne studiant ar Skritur-Zakr nemet en avis kaout ennan eun dra bennak da lavaret a-enep d'ar Gatoliked. Ar pezh 'zo sur eo ne vezont more

laouennoc'h eget pa gav d'ezo beza kavet eur gomz bennak hag a gondaon ar Relijion katolik. Klevet e vent neuze oc'h en em bompadi gwasoc'h eget eur brezelkaer hotus gouezet gantan ar viktore. Eun nebeudik komzou a zo, dreist ar re-all, hag int tennet eus kenta lizer an Abostol sant Pol d'e ziskibl Timothe (I Tim., IV, 1, 3) hag a laka enno eur fouge direiz. Ar c'homzou-ze, ma keromp o c'hred, a gondaon neat hag evit mat ar Relijion katolik. Rouez eo ar gristenien katolik hag o deus bet diviz ouz eur protestant bennak, ha n'o deus ket klevet dizale ar c'homzou-ze. Setu int ama: *Da fin an amzer*, a lavar an Abostol, *kalz tud a goll ar feiz o selaou sperejou ar gaou ha helennadurez an diaoul prezeget gant tud leun a fallagriez, o c'houstoniz: du-pot gant ar brasa pec'hejou, hag a zifenoù dimezi ha dibri kig, evel pa ne ve ket hema eur meuz boued krouet euidomp-gant Doue, hag a dleomp da gemeret en eur drugarehaat anezan.*

Ac'hanta, a lavar ar Brotestanted, soun o c'hribell, diwarbenn pion a gomz an Abostol sant Pól, ma n'eo ket diwarbenn ar Gatoliked eo? Rak daoust hag ar Gatoliked n'eo ket difennet en o Relijion dimezi ha dibri kig da zerveziou 'zo?

Lavaret em eus, o komans ar pennad skol-ma, e oa a-walc'h kaout eur gaou en eur Relijion evit he vije ken houma ar gwir Relijion, pe gwir Iliz Jezuz-Krist. Mes ha kavet ho peus ama, Protestanted, ar Relijion Katolik e fait, o prezek ar gaou d'an dud? Roit d'in eun tammig amzer, ma plij, evit entent mat ar pezh a livirit, ha n'e dit ket da zeni an drompilh ken buhan ha ker krenv hag an dra-ze! N'ema ket ganeoc'h nag an holl skiant nag an holl deskadurez. Mar fell d'eo'h entent rézon, klevit, da genta, penos an Abostol sant Pól, er pennad-ze eus ar Skritur-Zakr, a gomz evel ma skriv, diwarbenn an amzer hirio a zont d'eo'h pe evel ma 'peus an enor da lavaret? N'e ket, mes diwarbenn ar pezh a c'hoarvezo *da fin an amzer*, d'an deizioù, pe bloaveziou diveza eus ar bed eo e komz. Mat, ar Relijion Katolik n'eo ket da *fin an amzer* e teuo war an douar: rak beza ez eus anezi abouez tost da naontek kant vloaz so. Beza e oa er bed-ma eur pemzek kant vloaz bennak arók m'oa ganet ho tad-koz Luther. Eus a be berz eta e teuit-hu, Protestanted, da lavaret e komz ama sant Pól diwarbenn ar Relijion Katolik? Ma sonj d'eo'h eo tud diskiant ar Gatoliked, ho peus kalz fazi. Ouspente, ar Relijion Katolik n'he deus biskoaz difennet, miret ouz an dud da zimezi. Red eo kaout fallagriez eur protestant evit lavaret kement-all. Kaeroc'h so, an Iliz katolik he deus eur zakramant hag a ro d'an dud a zimez ar c'halon da vevz sante-lamant er stad-se, hag he beleien a zo aketus da roi he bennoziou d'ar re a zimez ha da lavaret evito an oferen santel. Gwir eo, avat, m'an eus c'hoant unan bennak da chom dizemez, ma kav d'ezan en deus bet ar c'halon hag an donezou digant Doue da viret ar gwerc'hted, an Iliz a roio he asant d'ezan. Mes klevit hag ententit mat, arabad eo lavaret evit se e virfe an Iliz katolik ouz den ebet da zimezi, m'an deus c'hoant. Ar pezh a ra an Iliz war ar poent-ma a zo, eun hag eun, gant ar pezh a lavar ar Skritur-Zakr: *Ar briadelezh a zo eur zakramant bras*, a lavar sant Pól (Elez. V, 32); *ar gwerc'hted, emezan ouspen, a zo eur stad gwelloc'h a bep hent eget hini ar briadelezh*. Miret a ra *hen e-unan ar gwerc'hted*, ha c'hoant an deus e teufe c'hoaz re-all da ober eveltan. An hini, emezan, a zimez e verc'h a ra mat, hag an hini n'he dimez ket a ra gwelloc'h. (I Kor., 7, 8, 38).

Ha c'hoant ho peus da c'houzout perak eo gwelloc'h ar gwerc'hted kristen eget ar stad a briadelezh? Gwelloc'h eo, eme c'hoaz sant Pól, abalamour: *An hini n'eo ket dimezet n'en deus hen soursi da gaout nemet da blijout da Zoue* (er memez lizer, 32-34). Abalamour da gement-ma ive eo e fell d'an Iliz e virfe he beleien ar gwerc'hted. Ar Brotestanted, avat, oc'h ober gwap ouz ar gwerc'hted, evel ma reont, a ya eneb-kaer d'ar Skritur-Zakr. Petra fell d'eo'h, goude tout? N'ema ket ganto ar spered a sklerijen, spered Doue.

Eun dra anat eo penos pep kristen katolik a hell dimezi, ma kar; mes eur wech, koulskoude, m'an eus unan, gant he volonteiz vat, roet e gomz da

Zone, great al le da viret *ato ar gwerc'hted*, an den-ze, dindan hoan a beched, a die derc'hel d'e gomz, evel ma tle pep den a enor derc'hel ato d'e gomz, ha pa n'en defe roet e c'her nemet d'eun den hepken, ha n'e ket da Zone: *Sevent, eme ar profed David, ar gwestlou ho peus great d'an Doue meurbed uhel*. (Ps. XLIX, 14).

Erfin, an Iliz katolik, en eur zifen dibri kig, da zerveziou 'zo, n'he deus ket ar zont diskiant da roi d'eomp da gredi a ve ar c'hiig-se fall, ha ne ve ket red drugarekaat Doue d'e veza roet d'eomp. Pa zifen an Iliz dibri kig, n'he deus ken sonj nemet da lakaat he bugale d'ober pinijen, rak: *Ma ne reomp ket pinijen, e c'esimp holl kollet*. (Luk. XIII, 3). Ober a ra evel an Aotrou Doue e-unan; Doue o skuilha e vennoz war ar iun. (S. Vaz, XVII, 20) na lavar ket e ve difennet dibri, roi a ra da entent hepken eo mat, awechou, chom hep hen ober, evit paea hon die d'e Justis.

KATOLI.

PARDON AR GALON-ZAKR

En Breiz, hon bro garet, pep parrouz an eus he fardon. De ar pardon-ze a zo evit ar Breton e-touez ar re gaeran eus ar bla. An holl a ve war droad, koz, yaonank, bihan ha bras; gwiskete ve an dilhad kaeran ha pep-hini a ra eus e wellan evit rei muio'h a dro d'al lido a ve zavet en enor d'ar zant paeron. Tridal a ra ar c'halon pa dosta; ar gerent hag ar vignoned en em wel, ar c'hasonio a ve ankouet, hag ar garante a gresk e-touez an tiegeziou.

Ni, Bretoned Pariz, sklabezet a bep koste er ger vras hag en he fabourzio, kaer hon deus bean niverus, n'hon deus na parrouz nag iliz da veuli enni hon zent koz. Da vilhan, beau 'zo en hon zontez daou visioner kalonek a dalc'h lec'h d'imp a bersoned hag a dremen bep miz, en kement korn a Bariz, lec'h 'zo kalz a Vretoned, da gomz d'e eus o fe hag eus o bro; a ya da welet ar te glav en hospitalio, a had e-touez ar te haour ar zikourio laket etre o daonarn gant tud vadelezn.

Al labour a zo poanuis, a dra zur; o c'harante evit o c'henvroiz a ra d'e koulskoude kaout c'hoaz an tu da zével euidomp pardonio a digas da zont d'imp eus re hon farrouz hag eus ar gizio a zevene hon c'halon gwechall.

Trugare d'e a greiz kalon! Dleomp omp d'e, ouspen, mar e dihanet en kreiz meur ar Vreton karante bro e gavel ha kresket ive e c'hoant, en despet da skouerion fall ar ger vras, da heñt bepred rouden an enor hag an honestiz a heñt he d'ado en e rok.

Pa digoris ma fenestr, ar beure-ze, toenno an tier hag al liorzo dirakon a oa gwean gant ar reo. An oabl a oa skler hag an eur fresk: ar Galon-Zakr, a sonjis, a fell d'ez rei eun devez kaer d'ar Vretoned evit mont d'he gwel. Evitar wech kentan, e klevi eus tadmoalc'h o kanou ha ma c'halon a dridas, rak, kaer am eus bean en diavez a ger, e klevan nebeut a laboused, memez en kreiz an haou. Sonjet 'ta pegen dous e oa e zón evidon!

Kan mignonig, a laris d'e an; te a zo ar gwellan dibabet evit digeri devez kaer hon fardon! Pion a lar d'in nan out ket te ive eus Breiz ha n'a teus ket bet kelo eus ar gouli a lar d'imp 'n em vodan livie en Montmartre! Pion a lar d'in n'e teus ket kwitaet traouienno sader Breiz-Izel, jachet gant eur femelen dener pe gant ar c'hoant da vale bro, ha ne ganez ket, ar beure-man, en eur zontal evi hon levenez, hag ive er bodenno leun a c'houez vat a zo du-hont en hon bro, hag ec'h e ken dous nejan ennet! Kan, evnig! Ma c'halon a gau ive ganit, rak fete me ya da'n em grenvat, da'n em frealzi, en eur hadbevan penn-da-benn bue ma farrouz, e-touez ma c'henvroiz, ma c'herent ha ma mignoned.

Abred ec'h is eus ar ger, ha mat e ris; da der eur e ligore al lido, mes arók an eur-ze, kreiz an iliz, miret evit ar re o devoa kartenno ar Vretoned Breiz, a oa leun-chouk. Ar re a oa eun tammik diweat, en despet d'o c'harantenno, a renkias chom en o zav. Bean 'oa hinienno hag a c'hozmole, rak an otro Dubourg, ar c'heskob Roanon, a deus da brezek hag an holl a felle d'he kaout plaso mat evit e chilaou; ar re-ze, mar dalc'hout zont, a deuo abretoc'h da vla.

Da gentan, e oa kanet daou pe dri eus ar c'han

tiko-ze o deus lusketet hon bugaleach : mogerio ar Galon Zakr a dlee bean souezet, rak nan int ket kustum da dregerni evelse gant mouezio ter ar Vretoned o kaman en yez o zadou.

Mes an otro Dubourg a digoue, ha, d'e heul, kalz a veleien freizad. Ar c'hân a dav raktal, hag e pign er gador-brezeg. Pa welis anean, eun tam lorc'h a zavas em fenn, rak hon arc'hestok a zo eur gwir Vreizad a wad hag a galon, hag e skoner a ziskoete penôs ar ween geltiek, kaer he deus bean koz, n'e ket prest c'hoaz da vervel keit e zavo diwarni freuz ar sort-se.

En eur brezegen kaer menbrud, e gasas da zonzj d'imp eus ar fe kranv hag ar garante-vro an eus gret, en amzer dremenet, oll nerz hag oll gened hon gouenn : diskouel a reas d'imp penôs, ni ive, a dle o miret gwriennet don en hon c'halon, mar hon deus c'hoant da chom din eus hon zado. Ouspenn kant haoter-kant mil Breizad a zo en Pariz, ha, mar 'n em glevfent oll, mar 'n em unanfant 'barz ar fe hag ar garante-ze ouz 'n em harpan an eil egile, elec'h 'n em lezel da c'hoant gant breinadurez ar c'herio, e trofent tu d'an treo hep dale.

Ar girio kaer a zo skrivet, emean, en eur achui, war armo hon bro Breiz a dle bean skrivet ive en kreiz pep Breizad : kentoc'h mervel evit 'n em vastari.

Goude-ze e oe gret ar prolesion endro d'an iliz ha roet bennoz ar Zakramant. Kavel e oe kantiko adarre, ha neuze e krogas an dud da vont er-maez. Eun otro, kustum da heuilh godelion Montmartre a lare 'nevoa ket gwelet kement-all a dud gwech ebet en iliz ar Galon-Zakr : ouspenn c'houec'h mil Breizad e kouter a oa.

En o zonez e oa kalz a itronezed a renk uhel a Vreiz, madoberouezed o c'henvroiz : gwelet em oa ive an otrone kont a Chateaubriand, kont d'Eu, kont a Mun, beskont Herve a Guebriand, baron a Gertanguy, kannad Gwengamp, beskont Alan a Lorigeril, Ervoan a Goniae, ha kalz a re-all.

Kalz a verc'hed a douge gwiskamauc'h o bro : potred a oa nebeutoc'h. An otro Clerc a gasas ermaez diou pe der zou a blijas kalz : ezom a vije en em glevfe da vla eun nebeut tud yaouank evit kaman bep eil, hag ouspenn 'n eul lec'h, 'vit m'an evo pep-hini e lod er blijadur.

Me a welas eno ma c'herent ha ma migooned kalz oll, ha ze a greskas evidon c'hoaz joa an devez-ze. Mes an noz a dostae ha red e oa 'n em dispartian. Kimiadet e oe en eur brometi dizrei c'hoaz da vla, ha me zo zur penôs, en eur gwilat e oa eur zonzj a anaoudegez en kalon pep-hini evit ar re o devoa bet ar boan da zavel ar pardon kaer-ze, ha, dreist-oll, an Tad Kamenen, sekretour Breiz.

LAOUÏK.

KLEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

LAMBAOL-GWIMILIO. — Evel m'oa bet embannet, dimerc'her, dez goul Maria-Veurz, ez eus bet e Lambaol eur gouel brezonek eus ar re gaera, e porz skol gristun ar merc'her, re enk evit digemeret ar bagad tud a yoa diradet eus holl barrezion ar c'harter, ha dreist-oll eus a Laundi.

Ha n'eo ket gwir em Breiz o tihuni ! Ya, frealzet menbrud eo va c'halon a Vreizad o welet ar poblou tud o tiredek evel-se da glevet prezek ha displega c'hoario brezonek. N'eus ket c'hoaz marteza kalz a dan sautel e kalonou hor c'henvroiz : hogen, gedomp eur pennadig, ha ni a welo bleuniou nevez o sevel war ar c'heñonkoz digustum da c'hlaza... Pa lavaran d'eo'h, Breiz a zo o tivorfila...

Da eun heur e oe gret eur brezegen war skolioz hon amzer, gant hor mignon ker Maoris Kloarec. War am eus klevet ez eus hano da zavel eun emgleo etre tud yaouank a boanio da lakaat miret er skolioz lik, da lavaret eo skolioz ar gouarnant, al lezen a zifen ouz ar vistri a zo enno koms evit pe a-eneb pep relijion. Sklear eo, n'eus ket leac'h da skei warno alies abalamour ma reont katekiz : abalamour ma reont gwap eus a Zoue, eus an Iliz hag eus feiz ar Vretoned, an dra-ze avad na lavaran ket, siouaz !

Bez' ez eus a-benn brema kalz a emglevio evel-se, hag hini Lambaol, mar deu da benn, a gavo c'hoarezed. Evidon-me, a greiz kalon, a reket d'ez i chanz vat.

Goude ar *C'hampidou* e oe eur brezegen-all gant ar Goff, eus *Paotred Gwihar*. Teurel a ra eur zell endro d'ezan, dre ar vro, hag ez eo mantret o welet ar reuz a zo dre-holl. Torfejon ar franmasoned a laka dirak hon daoulagad, hag ar jaden anezo a zo bir, siouaz !... Daoust da-ze, emezan, arabad eo fallgaloni, rak an amzer da zont a vo d'arre yaouank !... Hag ar bodadegon paotred yaouank kristen a welomp o tiwan e pep parrez eo an ed a goms R. Bazin anezan o sevel drus ha puilh.

Gwelet a ra goude pere eo ar c'hazetennoù a zo gomest da ober vad d'eomp-ni, Bretoned, stag mat ouz yez kaer ar C'helled. Henvel a ra ar *C'hourrier du Finistere*, ar *Feiz ha Breiz*, hep ankouna² c'haat *Kroaz ar Vretoned*. « Houma, emezan, a zo e brezoneg penn-da-benn. Gwir eo ez eo he skrivarioerien eus a Zant-Brieg. Meur a hini koulskoude eus a Vro-Leon a skriv enni ive, dreist-oll ar barz Klaoda, a welan ama en ho touez oc'h va zelaou... »

Bennoz-Doue d'ezan, nan da veza hauvet ac'hannon, mes da veza lavaret komzou ker mat diwar-benn hor c'hrouzig ker !

Staga rer goude gant *Jopig*, pez-c'hoari eus ar c'haera, a gas ac'hannomp war an adreñv, beteg an amzer ma kemeras hon tadou o fuzulioù mervlet evit mont da stourm oc'h ar *chas gall*, ar re c'hlas-se a ziskare kalvarioù hag ilizou kerkouls hag an dud dre gement leac'h ma tremenent.

Meur a wech eo bet teneuret va c'halon e-doug ar pez-c'hoari-ze, dreist-oll o welet *Jopig* o tarc'hel ker start d'e zekred, hag o kavout gwelloc'h gouzav ar maro dindan ar vez kentoc'h eget he zeurel war ar markiz hag e vab.

Gant an *Daou laer bara*, avad, eo bet dizec'het va daelou, rak n'ou deus ket gallet miret da c'hoarzin eus eur penn d'ar penn-all.

A ! aotrou Didou, ar wirionez a yoa ganeoc'h pa skrivesc'h war ar paper hoc'h eus ingalet e kavched ber an amzer !

Meulendi d'eo'h, meulendi d'ho *Paotred* ha meulendi ive da *Baotred Gwihar* !

Ya, meulendi d'an holl c'hoarioerien ! N'ouzon ket hag-en e talvez va zesteni d'eun dra bennak, ze na ra netra ; ar pez am eus c'hoant da lavaret eo 'n em eus ket gwelet gwelloc'h e nep leac'h.

Pa lavaran d'eo'h em Breiz o tihuni !

LANDIVIZIO. — Kaera gouel a zo bet ama dimerc'her da noz ! An holl a oar e reer er bloaz-ma hanterkanved gweledigeziou ar Werc'hez e Lourd, hag ez eus bet eno lidou kaer d'an unnek a viz c'houevrer ha dimerc'her, pemp-warn-ugent a viz mearz.

An aotrou Berthou, person Landivizio, a zo unan eus gwella servicherien an Itron-Varia-Lourd. Alies ez a d'he gwelet, ha ne esperenn netra evit dougen e barresianiz d'he c'haret eveltan.

Setu perak en doa savet eur c'haos e keur an iliz parrez, unan gran, me lavar.

Ac'hanta, kristenien Landivizio a yoa bet aliet da veza en iliz, dimerc'her, da eiz heur nemet kard. Goude eur brezegen verr great gant an aotrou Corre, kure, setu an dud o tout er-meaz evit ober prolesion ar goulon, evel e Lourd.

Brao e oa ar pevar mil kristen-ze o vont dre ruioù Laundi, goulou war elum en o douarn hag o kana ken na dregerne kear ganto :

O barzud ! Masabiel
A daol sklerijen,
'Vel an heol o sevel,
War bord an draonien !
Ave (teir gwech) Maria.

En holl brenecher e weled leterioù paper, goulou ha gwer sklerijennet. Eun dudi e oa gwelet kement-all !

E Laundi ez eus bep seurt tud : n'eus nemet kristenien, gwir eo ; hogen, meur a hini a zo hag o deus nac'het feiz o badiziant. Mat, gouezet o deus evelato lezel ar re-all da ober ar pez na blij mui d'ezo ; gwik dismegaus ebet na oe klevet e nep leac'h.

Dizrei a reer goude d'an iliz da gana ar *Gredo*, evel e Lourd c'hoaz.

Gouel kaer hag a vo miret pail amzer ar c'houn anezan.

KLAODA.

LOK-EGINER-SANT-THEGONK. — Eur barrez el levnez. — N'ouzon ket ha klevet ho peus e oa ar barrez-man heb beleg pevar miz-ze.

Evidon-me a yoa re a c'hlac'har hag a anken war va spered evit gellout her lavaret d'eo'h. Souj ho peus moarvad penôs an aotrou Corre — Doue r'pardouno — a yoa klanv war e wela pa denas an archerien d'hen tenler er-moiz eus e brespital, ha ne zaleas ket da vervel hag abaoe e oamp heb beleg.

Mat ! dirgwener, ar 27 a veurz, ez eo denet d'eomp da berson an aotrou Puilh, kure bras Plabennek ha, d'e heul, an Aotrou Doue zo denet ive adarre da jom en hon touez. Great e oa d'ezan, a c'hellit kredi, ar gwella digemer a c'houflet da ober, rak

Red eo diouret eun dra evit anaout
Pebeuz talvoudegez mad awalc'h a c'hell kaout

An aotrou Mer hag e guzulierien, kement *char-à-bancs* ha kement marc'h-houarn a zo er barrez, a yez d'hen diambroug. Ar bourek a yoa lenn a dud ha, kerkent ma welchont an aotrou Person, an holl a youc'has a bouez-penn : « Bevet an aotrou Person nevez ! Bevet ar veleien ! » Goude beza bet en Iliz o lavaret eur beden, an holl a ziroas laouen d'ar ger ha gant ar fizians da welet ar Religion o ren a nevez er barrez, kaeroc'h evit biskoaz.

Eul tennevez.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

PEDERNEK. — Eur bugel devet. — Driou, mab bihan ar Moing, Jan-Mari, oajet a zaoù vla, a grogas an tan en e zilhad war an oaled. Ar bugel a redas d'ar porz hag a goueas etal kled al leur. Eno oe kavet hanter devet. Kaer eo ober pep seurt, na oe gret nemet hivaat e boanioù. Dilun e varvas.

BUHULIEN. — Ar maro a deu 'vel eul laer. — Keramborgne, oajet à 70 vla, o tout eus Rospez, bet o welet e verc'h-vihan, a zo koueet skoet war an hent gant ar maro. 'Nevoa kleved ebet koulskoude, pa oa et eus ar ger.

BREIZ-UHEL

SANT-BRIEK. — Bugel dilezet. — Digwener, eul labourer o chom e kichen Sant-Briek, o vont beure mat da dennan plouz, a gavas e penn ar bern eur plac'hig daou vla pe waridro, goloet a skorn. N'halle na finval na komz. Kaset e oe d'an ti, diwisket ha tomet.

Betek breman n'e ket c'hoaz kavet he zud. Aon a zo ne ve bet laket pad an noz etal ar bern plouz ha dilezet eno gant kerent dinatur.

SEIZVED LIZER EUS NAONED

An tie kurioziteou. — Da betra int mat

Komzet am oa 'n em lizer diwean eus tie kurioziteou, ha pegen urzet mat int en Naoned. Evit gwir, trec'h eo Naoned war Roazon en kement-se. Tri zo ane, pep-hini savet ken dereat, ken ez eo eun dudi mont da welet an treo miret enne.

Hag, evit gwir, n'eus tra talvoudekoc'h evit an dud a gar sevel o sperejon ha studia histor o bro, eget mont da welet an tie-ze. El levrioù, e lennomp darvoudou c'hoarvezet en hon bro, a rum da rum, ha labourioù bras gret gant hon c'hendadon ; pegen plijas eo ive gwelet penôs e veyent en amzerioù koz, penôs e oa savet o zier, penôs e oa gret o gwiskamanchou, o arreburi, o hinvioù, o c'hoarziellou zoken. Evelse, e c'heller, kouls laret, beva gante, dioc'h o giz. Evelse, e weler penôs he deus chanchet, a rum da rum, a gantved da ganved, bue hon tadou betek an amzer-man. Komz a reont bepred, en hon amzer, eus sevenidigez, eus a arakaat. « Pa vo henvelekaet arreburi, gwiskamanchou, taolennou, skeudennou hon tadou gant hon re, ne gredan ket e ve kavet gwelloc'h hon re, pe goantoc'h, pan-e-gwir e klasker breman ober hevel ouz ar re goz. Ha setu c'hoaz talvoudegez-all d'an tie kurioziteou.

Aze e kav micherourien eveziek skourioù da heuilh, oberou kaer a vicher d'ober o gouid gante.

A hend-all, treo zo c'hoaz e ve red d'eur holl miret gant ar vrasa evez ha diskonel d'an dud gant enor ha fouge. Komz a ran eus an treo bet gwechall d'an dud brudet, d'an dud kalonek o deus stourmet evit ar Vro. Treo seurt-ze 'zo evel relegou talvoudus a gomz d'hon c'halon, evel ma komz d'ar vugale an treo chomet gante warlerc'h tad ha mamm.

Ne vije ket eur breton, nep eo vije ket e galon entanet o welet kleze Ar Gwesken, pe hini Richeimont. Nep a welane a glev evel eur vouez o komz en e galon :

Ha breman, pan n'eo ket re dregeriad al levr, daoust ha n'e ket re vretion? Re vretion? a laret-hu. Daoust hag eul levr skrivet en brezoneg a hall bean re vretion, 'vel bean re dregeriad. Klevet ho peus laret: Re a van ebet na dalv man ebet. Oamp o kous breman zouden eus ar wean vretion hag he deus pevar brank. N'e ket mat e vije dispartiet eur pevar brank: mes n'e ket mat ive ne vije nemet ar brank, rak pelhini e vije ar brank-se? Pe Leon, pe Dreger, pe Wened, pe Gerne a chomfe e-unan hag a dagfe ar reo-all? Ha petra 'vije ar wean gant eur heank hepken?

En eul levr brezoneg, n'e ket mat eta klask meskan an holl yezou mesk-mesk, evel ar yod en eur ganter. Kemer tam gant heinan, tam gant hen-hout, skoulman, gwriad kenver-ouz-kenver girion Treger ha Leon a zo labour gollet. Setu aman eur pôr, ha, war digare bean muioc'h breton 'vit ar re-all, a doug eur chupen giz Skaer, eur gouriz giz Sant-Tegonnek, eun tok giz Gourin, eur bragon giz Lesèveven.

Vit an neb a anave petra eo eur *groiskamant* breton, ar pôr-ze n'eo nemet eur zant malarje; n' eus stum breton 'bet warnean.

Lagad eur gwir Vretion a gav e si d'ean raktal. Mes an O. Clerc an eus miret, aman c'hoaz, hec'h lod d'ar wirione. Kement hini a lenno e bez labour a welo, eus an tol kentao, zo warnean slumun ha tres eun Tregeriad; hep mont pelloc'h, zoken, 'vit ar bazeu gentan, ni 'wel an dra-ze skrivet:

« Betek breman, emean, ar re a felle d'e deski ar Brezoneg na gavent nemet levriou hag e vije enne daou, ti yez war an dro. Leon, Treger, Kerne. Me gred eo kalz gwelloc'h rannan ar yezou, hag ober da bep-hini ane e yezadur. Perak ne vije ket eur yezadur evit Treger, eun all evit Leon? »

En eur gir krenn, al levr-man a brezeg d'imp. Tregeriad, bez Tregeriad, mes na re na re nebent; Leonard, bez Leonard, mes na re na re nebent; da bep hini e skaon; mes ar peder skaon war ar memes men-ouled; setu ar wirione rik.

Bannoaz ha trugare d'an O. Clerc da vean hen gwelet hag hen diskleriet ken freaz, da vean laket ken skler dirak hon daoulagad talvoudegez ar gir: *Unaniez a ra ners.*

Mes skleroc'h adare vo gwelet e souj, pa lakin aman warlerc'h ar c'homzou-man kemeret c'hoaz diwarnan.

« N'haller ket, emean, alian trawalc'h da lenn *Kroaz ar Vretoned*, hag an holl levriou a dea diwar dorn ar skrivagnerien a zo enni. Eanne 'vo kavet ar skouer eus ar reolennoù a skrivan aman. Oc'h heulth *Kroaz ar Vretoned*, e leufer, a dam da dam, da skrivan herve eur c'hiz reiz, ha — zo gwelloc'h c'hoaz — da skrivan herve ar memes giz. »

Setu aze eun tam lol-lagad war labour an O. Clerc, labour *tregeriad* ha labour *breton*. *Tregeriaded*, omp dleour bras a anoudegez d'ar beleg-man kalonek ha gwiziek a lak kement a smzer hag a hoan da zavel hano hag enor e gorn-bro; *Bretoned*, omp adarre ken dleour-all d'ean, rak 'n eurober 'vit Treger, e kemer e bleig diouz ober ive 'vit Breiz. Unanomp eta hon mouez gant e hini, ha laromp eveltau, 'neur souheti d'ar « Grammaire bretonne » eun digemer karantezus.

« Kerz, levr bihan, kerz gant skoazel sant Ervoan, paeron Bro-Dreger, ha desk d'ar vugale ha da vigooned Breiz-Izel komz ha skrivan, en doare ma zo dleet d'ei, eur yez eus ar c'hosan hag eus ar c'haeran a zo beo c'hoaz hag a c'houll bevant! »

DIR NA-DOR.

INTANV AL LOCHEN

Er hed-man, nag aour nag arc'hant Biskoaz ma c'halon n'o deus staget, Evit eur paour kez paizant, 'N em stad me a oa laouen bepred; Mes ma fried karantezus Hirie a gollan, pebez anken! Gwelet hag-en n'on ket gwalleurus... C'hwec'h krouadur a zo 'n em lochen. (diou wech).

D'ar c'houll ma oa beo ma fried, He furnez re dud ma c'halon, Ma bugale, ouz ma c'haerel, A roe d'in plijadur gwirion,

A heli eil e poken d'eze: Eun tad erussoc'h ne vo biken... Dre o justro tener meurbed, On c'hoaz evurus 'barz ma lochen. (diou wech).

Da vintin, pac'h an d'am farko, Adarre da gomans ma devez, E lezan ma bugaligo, Ouz ma zi da gemer evez, Ha da noz, pa deuan endro, Evit ma distrei eus ma anken, En em stagont holl war ma zro, D'am freakiz ebarz ma lochen. (diou wech).

Ma c'halven, hep kavet mizer, Sevel ha diski ma bugale, Me a halfe, gant an amzer, Fortuni ma merzhig marteze; Bob ma tenont da veza bras, Barrek da labourat en dachen, 'N em c'hoazi me a hello c'hoaz, Bezan evurus 'barz ma lochen. (diou wech).

Evurus meurbed en em gavin, P'o gwelin o c'homit o bara, Ha pa deuo ar maro kri, Diouz ar bed-man d'em diframma, Ma mignoned em intero En be ma fried, en he c'hichen, Ha ma bugale a ranno, Ma zam tiegez ha ma lochen. (diou wech).

Warlerc'h ar zôn goz-man ken tener ha ken melkonius, hastomp lavaret trugare da otro person Kermoroc'h, an otro Gelgon, hag an eus bet ar vadelez da gas anei d'imp.

Daoust hag an tön n'hallje ket bean skrivet, rak hon lennerien a garje holl gallout kanan eur zôn ken brao.

AR VOT EN MIZ MAE

Eur votadeg a dalvoudegez vras. — Sellet pep hini ouz interest e barouz. — Petra eo interest ar barouz?

Da viz mae, da laret eo, 'rôk eur miz aman, e zo da vean eur vot a dalvoudegez vras, evit hanvan er parouziou konsailhoù ha mèriou neve.

A dalvoudegez vras eo ar vot-man; perak? An holl votadegoù a zo a dalvoudegez, rak ac'hane e teu hepred kalz a droug, ma veint fall, kalz a vad, ma veint mañ, mui 'vit n'hall hon spered nivari; mes aboue lezennou an Disparti, galloud ar mèriou hag ar c'honsailhoù a zo kresket, ha war an tu a zell ouz ar relijiou.

Herve lezen an Disparti 1905, an arc'hant tennet digant ar veleied a vo lodennet bep bla etre ar parouziou. Lezen genver 1907 a lak an ilizou da zerc'hel, war gont ar parouziou, al lezen-ze a lak ive ar parouziou da herc'hen war ar presbiterioù, hag a ro d'ar mèriou galloud war zoniri ar c'hleier. Ouspen, bean ver breman, er Sened, gant eul lezen neve hag he deus c'hoant da lakat c'hoaz ar fondasionoù war gont ar parouziou, d'ar re man da bourvei ar pez a vo red 'vit derc'hel an ilizou en o zav.

'N eur gir krenn, ar mèriou hag o c'honsailhoù a zo, herve al lezen, koulz ha mestr er barouz 'vit pez a zell miret ar relijiou hag an ofisou. Frankiz o devo d'ober kalz a droug; frankiz o devo ive d'ober kalz a vad.

Ma zo bet biskoaz eta ezom da zigeri an daoulagad war interest ar barouz, arôk mont da hanvan konsailherien neve, eo hirie eo, rak, ma eo bet biskoaz mad ar barouz en perch, eo an de a hirie. N'e ket larete zo, el loden vras eus ar parouziou, tud o c'hortoz ar vot evit zeri an ilizou hag argas ar veleien; mes, siouaz d'imp, bean zo, en pep parouz, tud berbonellik, war digare *ru* ha *gwenn*, a ra ken gwaz labour 'vel ma rafe eur frannision aheurtet. An dud-ze, gant ar vot, a gerz bepred dre ar mezeze rouden, 'vel ar gwai o vont da beuri.

Kenton tra a glaskont, eo goût petra lar ar sounpred! 'Vit goût pelhini eo gwellan interest o farouz, ec'h eoit da gât... ar sounpred. Ar sounpred, 'vel just, a respont: Interest ho parouz eo ma vo helpennet ar *gwenn* ha heskinet ar person.

Eus o zù, ar re *wenn* a'n em glev da zerc'hel startan n'hallfout enep d'ar re *ru*, ha da reuti eun tol troad 'vit pep tol dorn.

Ha mad ar barouz, e kreiz kement a vrezel, petra deu da vean?

Interest ar barouz eo, da gentan, ma vo miret ar beleg hag an iliz, miret e blas da Zoue!

Gwelet hon deus en eskopti-man parouziou hag o deus bet chaseet o beleien; war o c'holl 'deus gret an tol-ze. An hostizien hag ar varc'hadourien a c'halfe lavaret d'ac'h, en Sant-Kleve, en Languieux, hag-en eo brao ober ar vicher en eur barouz hep oferen.

Interest ar barouz a zo c'hoaz ma vo savet mat ar vugale. N'eus tad na mamm ebet hag a zislare ac'hano war gement-man. Mes goût a ret penôs ar skolioù, hirie, a zo dalc'hel fall, hag e ve zilet eo, en speredoù ar vugale, gwirioneoù ha na dleont man da c'hevier put. Hogen, n'e ket re kaout en eur barouz eur c'honsailh barrek, pa vo red, da rei eur gentel d'ar mistri-skol, d'ober d'e doujan ha bean war evez eus o zeod.

Interest ar barouz eo c'hoaz ma vo pinvidik an holl, pe, da vihanau, en o ez, dre 'n em zikour ha 'n em glevet.

Me wel endro da bep iliz ha da bep tour eur pastel douar brasoc'h pe bihanoc'h, lodennet etre kant, daou-c'hant, pemp kant tiegez pe oupen. Bean 'zo parkou gant pep seurt freuz enne, bean zo henchoù da vont d'e. Henchoù mat, parkou dru, lodenn lart, tier souh ha kloz, setu, a-ziavez, pinvidigez eur barouz. Mes, arôk kaout henchoù mat, eo red d'an dud 'n em glevet 'vit o meinou hag o derc'hel; 'rôk kaout parkou dru kaer, eo red adarre 'n em glevet da zigas d'e temz ha merrl...

'Vit laret berr ha berr, ezom a zo eus eur « sindikat », 'vit n'ey nag arc'hant na poan al labourer da goll, 'vit ma teuo an holl, 'barz ar barouz, da vean well an eil eus egile.

Mes piou a rey an treo-ze? Piou a zoursio eus mad an holl? N'e ket pôtréd ar c'hosteennou, ha na reout netra nemet evite o-unan. Ar re a zoursio eus mad an holl eo an dud dibolitik hag a glask interest o farouz arôk pep tra.

N'e ket a-walc'h: interest ar barouz eo c'hoaz ma ne vo ket a zizuz d'ar zùl na war ar pemde, ma ne vo ket a skouerioù fall o toullan daoulagad ar re yonank. Ezom a zo ma vo en penn ar barouz eun den hag a ouio lakat en e c'hodel alc'houe an hostaliri, hag ober e zéver, koulz en ti an hostizien re dirankont evel en ti ar mistri-skol re divergont.

Interest ar barouz eo ive, ma vo dalc'hel gant o zùl er gêr, ar miñan ma vo gallet, ar lôtréd hag ar merc'hed yaouank a dec'h, pa veint arru en eun oad, d'ar c'hèriou ha d'ar broiou-krec'h. Eur c'honsailh mat a glasko bepred, abalamour da ze, an tu da greski pinvidigez ar barouz, da bellât ar gwall-skouer hag ar gwall-ebatoù, da rei d'an dud yaouank tu da labourat ha tu ive da 'n em didui gant honestiz.

Nag a ezom a zo eta en penn pep parouz eus tud a hoell, tud a galon, tud a spered, kristenien ha Bretoned mat, hag a ouio lakat da zavel en pep korn eus hon bro an had kristen ha breton.

Ar re-ze a vo da glask ha da zibab da viz mae. Gwell a ze 'vit ar parouziou a rey mat an dibab, gwaz d'ar re na refont ket!

F. AR BOURDER.

EWIT DE-HA-BLA EUR VAM

D'he bugel

Pac'ha, a-dreuz d'ar blao tremenet, Spered an den 'trezek koret karet, Kerent galvet gant Doue d'ar bed-all, Na vad a ra er gerent-se sonjal!

Ne hall ar mary hon harz da vriatan Korfo ar re-ze diskaret gantan, N'hall ket troc'h an chaden ar garante A stag bepred hon c'hulon oute!

Ha pa digoue de-ha-bla ar maro, En eur lakat 'n hon daoulagad daero, An dewez-se a ra d'imp c'hoaz gwelet Ar gerent vad hon deus, siouaz, kollet!

Hag hon daouarn war hon c'halon juntet, Hon daoulagad 'trezek an Euv troet, Dirak Doue e c'hallomp 'n em gât c'hoaz, Ha kât Esperanz, 'n eur welet ar groaz!

Hag hunvreal en ine tremenet, Gwelet an de 'ou hon c'herent marvet! O! diwezan sell, diwezan komjo, Kizellet neuze 'kreiz hon c'halono!

De meurbed kri, pa welc'h o vervel Ho mam dener, ken sad gant he bugel! Re vad e oa, 'vit 've ket 'kreiz ar gloar Ar vam 'garioc'h kement war an douar!

X...

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant: F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUDANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall,
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù holltek.

KUGNEUEDEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑNOU-KONVERZ

An Aotrou TOSSELIER, 27, ball Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag feiz.
A zo breur ha c'hoar an Breiz.
FENEZ AN GER.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallegerezo a Vreiz.
FENEZ AN GER.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vreiz, e ve Peche d'
MILIN.

ALUZENNOU "KROAZ AR VRETONED"

An otro Quiggin, Cambridge (Bro-Saoz). 8 real.

An otro Quiggin a zo bet eur pennad mat a amzer en Breiz, en Tredarzac, o studian hag o teski ar brezonek. 'N eur dremen en Sant-Briek, 'n eus fellet d'ean gwelet *Kroaz ar Vretoned* ha kinnig d'ei e zoug. Trugare d'an otro Quiggin 'vit ar garantez a zoug d'ar Brezonek ha da *Kroaz ar Vretoned!*

Benn ar zun a deu : LODEN AR VUGALE

Roll Rakprenerien "Bleuniou Yaouankiz"

An Aotroue :

F. Caurel, « Euvig Arvor », Sant-Nikolaz.	60
An abad Moreau, Plouha.	1
Dimezel Mari Lavanant, Loc-Eguiner.	1
Klaoda Ar Prat, « Plouezir », Landivizio.	1
J.-P. Le Braz « Dirlem », Landerne.	1
An abad Le Houérou-Kérel, Plounerin.	1
An abad F. An Dû, « Roc'hliann », Calanher.	1
An aotrou Lec'hvien, 48 ^e , Gwengamp.	1
An abad Chaussix, Plufur.	1
An abad Noël, Trébriand.	1
An abad Quévarec, Plourac'h.	2
An dimezel Milon, Amiens.	1
F. Quérou, « Eul lenner », Plougonver.	1
An abad André, person Prat.	12
An abad Castrec, Kastel-Paol.	1
An abad Conan, person Pleuvian.	1
Aotrou Kure Plésidy.	1
An otro chaloni Guillerel, person Gouarec.	2
E. Ar Moal, « Dir-na-Dor », Coadout.	2
An aotrou Coroller « Gweltas », Naoned.	1
An-abad Cudennek, « Mabig Efflam ».	1
Aug. Ferchen, Sant-Servez.	1

D'AM RAKPRENERIEN

Kement a lizerou mat am eus bet digant ma mignonad eur pemzek de zo, ken alies a hini an eus digaset d'in e c'hourc'hemennoù, ma n'hallan o zrugarekat dre lizer. Pedi 'ran ane holl d'am digarezi... War dioneskell *Kroaz ar Vretoned* e kasan d'e ma gwellan : Trugare!

AR YEODET.

VOTADEG MIZ MAE

Ar vot ha pemp mil skoed an deputeed. — Ar vot hag an Disparti.

Gout ouzoc'h, lennerien ger, pesort c'hoant an eus ar gouarnamant er mare-man? Lakat mériou en pep parouz hag a hlego d'ean en pep tra, mériou ha na refout kammed ebet, na finifont na biz na troad, hep goulenn digant ar mestr-skol, pe ar soupreded, ha mat eo; mériou ha na vont ket servijerien o farouz, mes servijerien ar gouarnamant en o farouz.

Holl nerz, holl ijin, holl c'halloud ar gouarnamant, e archant (da laret eo, hon archant) e bromeseou kaer a vo lakat en impli en pevar c'horn Frans evit touellan daoutagad an dud, hag ober d'e gwelet eun trenst 'lec'h nan eus nemet eur blouzen.

Gwelet a vo deputeed a bemp mil skoed o tont war ar maz, o geno leun a vouse'hoaz hag a gomzou flour, henvel ouz p'otred ar c'hruoziteou, a deu de ar foarioù hag ar pardonioù, da zuian gwenneien ar faligantad.

An deputeed eo bet o dorn 'n hon godel dija, mes 'vit miret ar pez o deus tapet, o deus ezom eus mouezioù an dud. 'Vit bean didrous en Pariz, da zibri o fenn mil skoed, o deus ezom e ve, dindane, en pep parouz, tud eus o dorn, d'ober an tav war ar re a c'hozmolo ha da zistroadun ar wirione er vro gant leodadun ha gevier livet en Pariz.

Gwelet nag a streuveul a gemeront, gwelet nag a drouz a reont, nag a gomzou a silabeont! Me glev laret penôs en eur ger diwardro, e teufont c'houec'h pe zeiz, disul, da dispakan dirak an dud eur zac'had bras a c'hevier seurt ma ouier kroui 'barz ar Gambr. Seurt gant ar franmasoned n'eus ket da dremen eur marc'h dall 'vit unan mat, ha pa veint c'houec'h pe zeiz tapet asambles, int seiz gwech gwasoc'h c'hoaz. C'hoarvez a ra neuze 'vel ma lar ar Skritur : an diaoul, o tizrei gant seiz-all gwasoc'h 'vitan da lakat an den paour dindan e dreid.

Hirie an diaoul a vale en hon zonez kalz muic'h 'vit ne sonjer, rak hon daoutagad digristenet n'ouzont ken anaout anean dindan ken lies a stum trompluz 'vel ma kemer.

Gout ouzoc'h c'hoaz, lennerien ger, war betra 'man sell ar gouarnamant hag ar franmasoned, (ar memes re int), pesort labour an eus c'hoant d'ober gant ar mériou premet gantan?

C'hoant an eus d'ober, da vat, an Disparti en pep parouz.

N'e ket a-walc'h skrivann el lezen : An Disparti a zo gret etre ar Gouarnamant hag ar Relijion ; — ar Veleien n'o devo ken a bae ; — an ilizou, ar presbiterioù, ar fondasioù a vo roet d'ar « gommun » ; — ar fabrikou 'vo diskaret hag o zreo a vo lodennet... ; n'e ket a-walc'h skrivann kement-se ; ren eo hen ober.

Kant klevet, eme, na dalv ket eur gweled ; kant laret, kant skrivet na dalv ket ive eun ober. Goude bean lavaret n'eo ken Frans eur vro gristen, eo red he digristeni ; 'vit se, ar franmasoned a gont war betra? **War votadeg miz mae!**

P'o devo laket eur m'ér fall en eur barouz, o devo gret eur gemmed vras oupen warzu an Disparti, rak, herve hon doa lavaret breman 'zo pemzek de, ar m'ér an evo kalz a c'halloud da zispen ar relijion er barouz, kalz a c'halloud an eus anean e-unan, ha kalz an evo abeurz ar gouarnamant.

Neuze 'ta, lennerien ger, en hano Doue, ho pet sonj, ne hanvet den ebet, forz piou na penôs e vo, na pa ve (da gaout, zoken), ar gwellan eus an dud, na pa ve eun den prest da renti servij, prest da baeann bannac'hou, prest da c'hoarzin ouz an holl, ne hanvet ket anean, mar 'zo marc'hajon gret etrezan hag ar gouarnamant, ma eo mignon ar soupreded, mignon ar mestr-skol, ma 'man e zurempred en tu ru. Ne hanvet ket anean! Eur blei eo dindan kroch'heun eun oan!

Gantan 'viije zikouret digas pep fall er barouz ha kas ermez pep mad. Gantan, pe drezan, vo digaset ebatou, c'hoarioù, levrioù, kazetennou dizonest ; gantan 'vo pellaet ar yaouankiz diouz an iliz, troet eueb ar person hag ar veleien ; gantan, pe drezan, 'vo brudet tezennoù divalo 'vel houman : An holl relijionoù a zo mat ; pe houman-all : Ar madon eo red o lodenni.

Evelse, tam dre dam, e vije *achuet* an Disparti 'n ho parouz, hag achuet gant ar re o dije volet 'vit kensortet ar Gouarnamant, rak ar mériou fall harpet gant Pariz ha Pariz harpet gant ar mériou fall, a raje neuze an Disparti en *halonou* an dud, ha dreist-holl, en kalonou ar Yaouankiz.

A-wech gret an Disparti er galon, a-wech kaset ar relijion ermez ar c'halonou, ne chomje ken diouz an den nemet al loen goue.
Ha c'houi oar mar eo brao bevan gant loened goue.

F. AR BOURDER.

AN NOR DRAILHET

D'an aotrou Herve, person Plufur.

A hep seurt fallagriez eo gwelet dre ar vro ; Ar Gwir a oa trec'het gant ar Gaou tro-war-dro. Evel eur wagen-vor, flastret ganti pep tra, Ar spered dizoue a zeue d'hon gwalla... Dirakan pep tra gaer a vije labeet, Dindanan pep furnez a vije mastaret ; Lealded ha Glanded, kaeran treo 'zo er bed, A zo dent da vezan divalo bras m'eurbed. An devez a hirie n'o deus talvoudegez Nemet al loustoni, an droug, an hudurnez ! — Red eo, eme ar Fall, mouga ar Fe gristen, Kredennou diskiant n'hallont ket beva ken ! Kredennou gwrac'hed koz, mad en amzer gwechall, N'int ken diouz ar c'hiz ; breman e fell treo-all ! Hag eur pennadig 'zo — avel a zotoni, — Ar bed 'zo daoubennet, trubuilhet mui-ouz-mui ; Mene'h, leanezed, breudenner ha beleien, Servichourien Doue, mignonad ar bewien, Holl ez int gwapeet, bagaset, harluet, Barnet hep lealded, tamallet ha laeret ! Dirak an torfejou ken kri ha ken poanuis, Dirak ar fallente, en pep stum ken heuzus, Kounnar ar bobl gristen a deus da grozal, Hag ouz an drubarded e stourmas start raktal... En despet d'hon c'halon ha d'hon fe birvidik, An nerz goue a drec'he an dudou reuzeidik ;

Penaos e oe savet Kalvar kaer Plougastell

(Trede bennad).

Bezomp trugareuz e-henver ar beorien ; ar garantez a zistinn justis an aotrou Doue ; roet en deus e c'her e talc'ho sonj vat eus eur werennad zour roet en e han.

Eun tregont leo bannak he devoa da ober, en eur vro breset a hep tu gant hep seurt soudarded, evel ma 'm eus hen lavaret uhelloc'h. Pemp dervez a yoa abaoe ma oa tec'het eus a Blougastell. Ha brema, evel m'hon deus gwelet, e tigueuze e Klo-c'hars-Karnoët.

Tremen eun heur a yoa edont eno o c'hedal, hag ar paotr na zistroe ket. Thereza hag he c'hompagnuneez a oe darbet d'ezo kredi e rankent mont larkoc'h, pa weljont o touet eur bagad gwa-zed ha m'erc'hed, ar paotrig en o fenn.

Dizale e oe kinniget d'ar veajourien kement a yoa er geraden. Va Doue! nebeut a-walc'h a dra : bara du, hag eus an hini grosa, ha neuze leaz. Plac'h ar c'hastell, avad, hag he zad a oe mall ganto terri o naon. O veza m'oa red d'ezo ober tro evit miret d'ean eun gavout fall, ez eant ama hag a-hont, dre al lanneier, aboue ar mintin, hep beza deuet a-beun da gaout netra da zibri.

P'o doe debret dioc'h o naon, ha pa oent diskouezet eun tammig, hon tud a yeas da gemeret o hent adarre.

« Ha plijout a rafe gant unan bennak ac'hanoch, eme Thereza d'ar gouerieded, dont da ziskouez hon hent d'eomp eur pennadig? »

Goude beza chomet eur pennad da darta, unan eus ar wazed a asantas kemeret warnan ar garg-se

Konchou kaer a-walc'h a glevan diwar da benn !
Deus en ti !

Pa oant et er zal, ar person a lavaras :
— C'hanta ? Hag a neve ?
Bernadet a respontas en eur gnanen :
— An « Itron » he deus lavaret d'in digemen
d'ar veleien he devoa c'hoant e vije savet eur
chapel en Masabiel.
— Pesort « Itron » ? eme an otro person.
— Ean Itron gaer hag en em ziskoue d'in din-
dan roc'h Masabiel.
— Ya, mes pion eo ? Anaout a rez anei ? Eus
Lourd eo ?
— N'e ket. N'anavean ket anei.
— Hag e tenez da gat ac'hanon abeurz eun
itron ha n'anaveez ket ?
— O ! otro person ; an Itron a welan n'e ket
henvel ouz an itronezed-all.
— Penôs 'ta ?
— O ! nan ; houman a zo kaer, 'vel ma tleer
bean 'harz ar baradoz.

(Da heuilh).

AL LIN EN BRO-DREGER

Dastumet eo al lin. N'eus ken nemet reuvelat,
rak me gont eo bet sekret og ha ne vo ket red
hadpradan.

Reuvelat lin zo eur vicher lous ha kalet. Betek
bremen, 'vije gret gant an dorn hag ar reuvel, hag
ar paour kez labourer 'pad an de'n e garti, c'hoaz
dour dispen emesk an ujen hag ar poultr, a huan-
ade o sonjal e oa mekanikou da zornan, mekani-
kou da hadan, mekanikou da droc'han foen, da
droc'han ed, ha mekanik ebet da reuvelat. Neuze,
evel m'hon deus lavaret aman n'eus ket pell, otro
person Lanvilin, true d'ean ouz e barousianiz o
welet pegement a hoan o devoa, a lakas en e
spered gant eur mignon pe daou, ober ar mekanik
da reuvelat. Ijinet e oa ha klevet hon deus lavaret
marteze e vije gret unan pe daou, da esa, 'benn
miz gouere.

Pan eo reuvelat lin, al labourer an eus breman
eur c'hrog d'ober gant ar miliner a zo du-ze o
chom war ar ster hag an eus tad ha bevniou da
vreat, hag a ra konvezz al lanvaz goude ma ve
brêet.

Al labourer a gemer eta eun toullad dornadou lin,
talvoudegez pemp lur, hag a ya gante da gaout ar
miliner. Setu breet al lin, ha pouezet raktal al
lanvaz. Pemp lur lin a die tapout eul lur lanvaz.
Awechou e tap ouспен ; neuze 've gret eur gont
neve ; al labourer an evo da gaout ken lies a bez
ugent real war bep milier lin, vel a bouez a wenneg
a zavo an dornad lanvaz, en tu-hont d'al lur.

Ha gant-se, ma 'deus 'n em glevet ar miliner hag
al labourer war ar briz, ha laket ar milier banter-
kant skoed, ma pouez al lanvaz eul lur ha pouez
tri wenneg ouспен, priz ar milier a gresko hag a
dapo 165 lur.

Priz uhel eo ; marvad, ne ve ket gwerzet ne-
meur a lin er priz-ze ; labourerien Treger, evel hon
deus lavaret ha diskouet dija, a dap koulskoude.
prijon kaer eus o lin. Pinvidik int hag ar viliner-
ien a zo muioc'h c'hoaz.

Elec'h ne oa breman zo ugent pe bemp bla war-
nugent, nemet diou vilin lin, zo breman ouспен
kant. Ar milinou bleud a ya da vilinou lin hag e
weler neuze endro d'e berniou lin brasoc'h 'vit tier
o c'hortoz bean breet.

Eun dro bennak e komzfomp ive aman eus ar
milinou lin. Breman, pa 'man e bemp, c'houec'h,
seiz, eiz kant lur, hag ouспен, en e c'hodel, al
labourer a zo dinec'h. Grel an eus e lod labour ;
d'ar miliner d'ober e hini.

(D'achui).

WAR ZAO, BRETONED !

Sonet ar galv, sonet, kleier,
Rak arru eo poent an amzar
Ez eo red dihun ha zével
Evit difenn hon Breiz-Izel.

A bel amzer, ez omp monstret,
Daoust ha n'omp ket ken Bretoned ?
An urz a zo deut eus Pariz
D'ober d'imp eur brezel iski.

Prestik e vezimp kabestret,
Laket 'n eur c'hraou gant al loened ;
Hopomp oll foi d'ar vorrevien,
Ia, ma fell d'imp chom kristenien.

Heuilhomp bepred ar gwir roudou
O devoa heuilhat hon zadou,
Hag evelte, d'ar gwir Doue
Bezomp fidel 'pad hon bue.

Ar C'hallaoued, gant kaojou flour,
O deus c'hoant d'hon laket a-skour ;
Poent eo skarzan an hailhoned,
Rak oll ez int amprefaned.

Sonet, kleier, sonet trompill,
C'houi 'pere zo a-istribill
Ouz mein benerez an touriou,
Dihunet hon zad 'n o beziou !

Evit armou 'zo bizier dud,
A-walc'h da argas an dud ;
Eus an Arvor, eus an Argoad,
Diredomp buhan d'an argad.

Ma chileot 'ta, kenvroiz,
Diredomp oll enep Pariz,
Difennomp hon Bro hag hon Gouen,
Karomp Doue hag e lezen.

Loiz Napoleon AR ROUZ,
Eostik Traou-Geodi.

TOL-ESA WAR BUE SENT BREIZ

Sant Konwoion, abad kouent Redon (800-868)

An abad Konwoion hon c'has
d'ho kavet 'vit ho pedi da
viret d'ean al lec'h an eus
dihabet da bedi Doue eri-
doe'h hag evit Breiz-Izel.
(Konzo, Louhemei, diskibl
Konwoion, da Nomenoe).

An O. Doue a lakas e bae da Nomenoe e kichen
e labour ; en Ballon, tostik-tost da gouent Roton
e strakas an emgann diwean ; eus oe pladet mik
ar roue gall ha gwintret ken yac'h zoularded hag
oll, ken e renkas plegan d'ober ar peuc'h hag an zav
'n evoa ken man ebet da glask en Breiz-Izel.

Epad ar brezel-man, Konwoion na roas da
Nomenoe nemet sikour e bedennou. Mes epad ma
oa ar prins breton o c'honid frankiz e vro war
an dachen vrezel, Konwoion, evel gwechall Moizez
war ar mene, a bede gant e venec'h en e gouent.
Sonj an evoa pa oa kannaded Nomenoe o pedi ar
roue Louis evitan hag e venec'h, hag e tene da
gas, d'e dro, e bedennou dirak tron impalaer an
Envou, m' o dije ar prins breton hag e zoudarded
o mennad.

Nomenoe a drec'has eta war ar C'hallaoued,
sikouret gant pedennou Konwoion, evel m'an evoa
trech'et diagent, war ar memes Gallaoued, Kon-
woion skoazellet gant Nomenoe.

Mes goude bean hadstaget e gleze ouz e goste,
ar prins a welas an evoa c'hoaz da hadkregi gant
eur brezel-all. Sellou eur Breton, o paouez gounit
d'e vro he liberte, na oant ket 'vit paran gant
plijadur war ar pevar eskob gall a oa pignet war
dron sent koz Breiz-Izel, en Gwened, en Kerne, en
Leon hag en Dol.

Nomenoe an evoa ezom eus moueziou an dud a
iliz da vean anaveet da vestr en Breiz, hag ar
pevar eskob gall oa dies damesaat ane. Setu eun
de ma oa oc'h invoi war gement-man, ha sant
Konwoion o tont da skei war dor e balez. Evelse,
gwechall, pa oa abad Roton war var a di, Nome-
noe a deus d'e welet hag a roas d'ean sklerijen
ha skoazel.

Ar prins a reas, d'e dro, digemer kalonek d'ar
manac'h :

— Prins, eme heman, ha c'houi oar en pesort
doare trist eman ho pro ? Breiz-Izel a zo gwalet
gant ar re o deus kard d'he sturian, gant eskibien
foll hag a lak e gwerc sakramant an Urz. Tolet
ple, ma ne ve ket kastizet an torfed-se, Doue hag
ar zent a gemero kaz ouzo'h hag a zigaso reuz war
ho tanve.

Konwoion 'n evoa ket ezom da c'hourdrouz ar
prins, d'ober d'ean sevel e vouez enep d'an dizurz-
man, rak an eskibien tamallet a oa ar pevar deut
eus Bro-C'hall.

Herve al lezen, pion bennak, ma eo den a iliz,
hag a werz treo sakr ar relijion evit arc'hant, a
die bean torret eus e garg.

Nomenoe a zavas raktal eul lezvarn hag a c'hal-
vas dirakan ar pevar eskob gall. Ar re-man a anza-
vas o devoa bet digemeret, digant beleien neve,

donezonou, profon kinniget d'e evel eun testeni a
enor hag a zonzans, hag e oant e souj da zerc'hel
gant ar c'hiz-se. Ar varnerien a esllamme. Kou-
woion ha Nomenoe a zonzas neuze e oa ar gir
diwean d'ar Pab ; kaset e oa eta, eus an daou du,
kannaded da Rom. Nomenoe a gasas Konwoion ;
an eskibien gall a yeas o-unan daou ane.

(Da heuilh).

KELEIER EUS AR BEB-OLL

Penôs oa bevet ar zoudarded. — Ar zou-
darded a zo oc'h ober o zervij en tu Verdun ha
Toul a oa bevet, eur pennad so, gant lig konta-
met, kig loened klanv gwerzet d'ar c'hazern gant
kigerien digonsians. Eun enklask a zo bet gret,
hag e zo difennet ouz meur a giger digas ken a
gig d'ar c'hazerniou.

Etouez ar gigerien-ze e lavarer 'zo franmasoned,
hag e ra ar pfred gwellañ m'hall 'vit tenuan ar
bec'h diwarne.

Eur beleg yaouank a 65 vla. — En Aotrich
'zo o paouez bean beleget eur mestr-kelenner war
ar filozofi hag a zo bet et war ar studi beleg
goude maro e wreg. Ar beleg yaouank-man an
eus 65 vla. E vuçale, eur pôlr hag eur plac'h,
i dimezet, a oa deut da welet o zad o lavaret e
oferen gentan.

Maro eur senedour katolik. — Dimeurz di-
wean e oe interes en Konk-Kerne an otro Cham-
maillard, senedour ar Finister, unan eus gwellañ
difennourien ar wirione hag ar relijion er Sened.

Mes an otro Chammaillard, herve e greden e-
unan ha kreden e vignoned, 'n evoa ket 'n em
gavet 'bouez ar vot diwean, o vezan bet pilet en
parouz Plozevet gant eur vanden hailhoned, mi-
gnoned d'Ar Bail, depute ar c'hoste-ze.

An otro Chammaillard an evoa gret klemm d'ar
polis abalamour ma oa bet skoet, hep gir ebet
eus e beurz. Ar poliz betek han, n'he devoa ket
finvet. Breman e fuvio nebeutoc'h c'hoaz.

Eur beleg er prizon. — Digwener, da bemp
eur, en ker Annecy, oe gwelet ar pez na oa bet
gwelet biskoaz.

Ar veleien o vean bet chaseet eus o zi, ar polis
a grogas war unan ane, eur c'hure, hag a gasas
anean dirak eur c'honiser. Ac'hane e oe roet urz
d'hen dastum er prizon. Ya, mes setu aman ar
gwasan. Peuruian, an dorfetourien a vije kaset
d'ar prizon dre an hent berran. Ar beleg oe gret
d'ean ober tro ker, ar chadennoù war e zaouarn,
etre pevar jendarin.

Evelse oe graet gwechall d'hon Zalver en ruioù
Bethleem. Spered ar franmasoned a c'houarn
ac'hanomp a zo henvel ouz spered ar Judevien
gwechall, ha spered ar Judevien, petra oa ken
nemet spered an diaoul ?

Daou c'hant mil den war ar pave. — N'e ket
brao bean masoner na kalvez en Pariz er mare-
man ; setu breman zouden e voint daou-c'hant
mil dilabour.

Kas touzan o danvad o deus kignet anean. Kas
kaout pae re vras gant o mistri, o deus laket ar
re-man da zeri o stalioù, ha setu tapet ar viche-
rourien hep labour.

Koulskoude, eme, pa fell d'e kaout pevar real
an eur, na blegfoint ket da gemer naontek gwen-
neg. Da c'hortoz, e refont kof moan. Ha kouls-
koude, bean 'zo ane marteze dek ha pevar-ugent
war gant hag a gemerfe naontek wenneg a galon
vat ; mes ar sindikajou ru a zo mestr.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

LOUANNEC. — Bugel devet. — Lezet ket
ho pugale o-unan en-dro d'an tan. Setu aman
c'hoaz eur bugel devet en Louannec, eur plac'hig
Michel, oajet a dri bla hanter, hag a zo marvel,
siouaz, diwar ar gwall dol-man.

PLOUAGOR. — Mam dinatur. — Catherine
Gourio, eus Plouagor, hag he devoa dilezet he
merc'h, en kreiz an noz e kichen eur bern plouz,
'n eur vereri tost da Zant-Briek, a zo bet tapet ha
zerret gant ar polis.

Arôk kwitat he merc'h he devoa tennet d'ei he
mouchouer stamm, o lezet anei evelse da skornan
dindan ar reo noz.

TREDARZEC. — Kouet diwar eur wrac'hel
lann. — Eun den eus Tredarzec, F. P., a zo
kouet diwar eur wrac'hel lann. Ar medisin a
gred en em denno.

Kraban an Diaoul a zav zoken war an iliz,
Petra a refomp-ni outan, ma c'henvroiz?

Eun de, ar sperejou a zo nec'het da vad,
Keleier fall a deu hep paonez ha dalc'hmad...
— Hepdale, a larer, e vezo mastaret
An iliz kaer ha koant lec'h omp bet badezet;
Gant Bro ar Vretoned, Bro ar zent hag ar Fe...
Keckent hag a hep tu, an holl, a vouez uhel,
A lavar kounaret: « Biken, kentoc'h mervel!
Biken, emé, biken, ni a chomo bepred,
Kristenien, Bretoned, tud ter, pennon-kaled!
Deuent aman eta!... An dud fall a welo
Hag-en oar ar Breizad mervel c'hoaz 'vid e Vro...
Dont a rejont dre-holl; neuze en pep parrouz,
Eun de, dreist ar re-all, e savas brud ha trouz...
— Petra 'zo a neve, ma klever, ankenius.
Ar c'hloc'h-galv o teurel taoljou lem ha skiltrus?
Petra 'zo a neve?... Tan? — kalz wasoc'h, siouaz!
Buhan war an avel ar c'helo a redaz...
An iliz vinniget a zo breman kel'hiel,
Den n'hall tostât outi; an dra zo difennet!
Setu perak an dud a zired leun a spont
Endro d'an iliz koz... Mes Petra a welont?
O bered ken sioul, o beredig santel,
A zo dent da vezan... Oh! eun dachen vrezel...
Eur vanden soudarded, archerien war gezek,
Gante « pot-al-Lezen », hag int holl gwall-vezek,
A glask, unan ané, teul e bao war an nôr,
Ar re-all hen harpa d'ober an *Invantor*...
Ar hobi a deu bepred da zifenn e iliz,
Da huchal d'al laeron: Frankiz, frankiz!
Dirak kounar ar bobl, ar fall a gemer doan,
Al laer n'eus ket amzer hag a reak mont buhan:
« En hano al Lezen, digoret d'imp an nor!
A huch al laeron gars, war ar paourkez Pastor,
— En hano al Lezen? eme ar pastor mat,
» Lezen abed er vro na raio d'in kwilat,
» Ha dilezet ganac'h gwirion an Iliz sakr,
» N'halla ket hen ober hep bezan den fallakr;
» Ma c'harg eo o diwall, biken ne vin trubard,
» Betek bezan trec'het, me o difenno stard!... »
— « En hano al Lezen! An eil gwech eo, aotro,
Ma ne c'houllet plega, neuze c'houi a dorro...
— « Terri a rin kentoc'h! — Ha mouez beleg Doue
A zo kerket stanket... An dud a lar: True!
— « En hano al Lezen! An deirved gwech, houman,
» Digoret d'imp an nôr, rak ni eo ar c'hrenvan...
— « An Nerc'z a zo ganac'h, ganin eman ar Gwir,
» C'houi ho pezo, m'hen goar, ya, an diwean gir,
» Mes ne vo ket laret en do an mesaer
» Dilezet tra e vestr etre daonarn al laer...
» Kemera ran hirie Anaon ar barouz,

meurhed risklus d'ar mare, hag eur pennad goude,
edo an dijentilez o pellaat dioc'h Kloc'hars, goude
beza roet d'an dud-se meur a desteni eus he c'halon
vat.

Lezomp a gostez meur a hini eus an darvoudon
a stourmas oc'h demezel Plougastell; deomp ganti
dioc'htu zoken war-eün da Hennbont.

Janned a Vonfort, intañvez Yann, a yoa hi
hec'h-unan o rei he urzjou da gear. Epad ma oa
bet beo ar c'houi, hen he diwallas dioc'h taoljou
arme Charlez Blez. Brema, pa 'zo oa intañvez, e
tifenne gant kement a nerz-kalon gwirion he mab
hena.

War bouez goulenn alies Itep skouiza da c'houlenn,
setu ma eo kaset Thereza a Blougastell betek an
itron, intañvez Monfort. Thereza en em daolas
e-harz he zred hag a c'houlennas outi, en han'
Doue an aotre da vont betek he zad, baron Plougastell.

— « N'eus ket ama aotrou ebet hag a zougfe an
hano-ze, demezel, » a lavaras an intañvez gant
eur vouez rust. Houma a gredas eur pennadig e
teus an demezel, digaset gant enebourien tu Monfort,
da c'honzout doare an traoù e kear.

O klevet lavaret n'edo ket he zad eno, an demezel
a zavas en he zav evel eun tenn, drouk-livet
ha sonezet bras.

— « Petra! emezi, daoust ha gallet ez eus bet
kas ar fallagriez betek fazia ac'hanon evel-se? O
Itron, kredit ac'hanon: digaset ez eus bet kelou
d'in evit lavaret edo va zad ama o vervel en eun
toll kuz bennak. Ha perak, va Doue! ez eus
lavaret d'in eun hevelep gaou? »

Skoet he c'halon o welet eur seurt glac'har,
Janned a jenchas ton hag a reas oc'h Thereza eur
maread goulennou. C'hoant he devoa da anaont
an histor penn-da-beun. Pa deuas ar plac'h

» Da vezan testeni dimeus ho micher louz;
» Ober rin ma dever, ma dever hep sponta,
» Beleg on da Zoue, difenn a rin e dra! »

Ar bobl a zo didrous, « pot-al-Lezen » a gren,
Eur peuc'h gwall ankenius eur pennadig a reu...
— « Aman buhan, potred, pellaet an aotrou,
» Ha goude, didamant, d'an nôr gant benvioù!
» Ha daou archer garo a ziframm den Doue,
» Hag hen kas, divergant, da ouela a goste...
» Breman, da vihanan, al laer a c'hall poanial,
» P'hen deus ar mesaer war e dreid eun bual...

Eun nebeud boued galeou a goll amzer ha poan,
A draih o benvioù... Mes an nôr na ra van!
— « Ar vouc'hal, ar vouc'hal eme « pot-al-Lezen »,
» N'hallomp ket marc'hata ha termal da viken...
» Allo, c'houi, soudarded, war arak ha kalon,
» An nôr a zigoro, en despet d'ar person!
» Neuze, o tra spontus! eur soudard a dosta,
» Eur gourc'hemen ken fall a ra d'ezan krena...
» Karet en dije well, hep mar, ober treo-all,
» Evit senti breman da urzjou an dud fall.
» Mes an urz 'zo roet, eun urz garo ha kri,
» Ar gourc'hemen 'zo striz, n'haller ket dizenti!
» Eun tol bouc'hal pouner... O glac'har hag auken
» A ra d'ar gristenien loskel eur griaden!...
» An taoljou a stanka; o lekleo truezus,
» A ziston an iliz... Oh! nag ez eo poanuis!
» Ar c'hloc'h a zon klemmus, klemmusoc'h 'vit

E vouez a vesk daeron gant hirvoudou ar c'hilaz...
Ar bobl, war e zaoulin, mantret gant ar glac'har,
A zistank da ouela dirak an dud gir;
» Us d'ar vered zoken Anaon an dud koz
» A darnij hag a glem, hag a deul e valloz...
» Seblantout a reont huchal d'o bugale;
— Oh! difennet eta, difennet ti Doue!
» Ar vouc'hal, didue, a sko bepred stank, stank,
» Hag, en dor an iliz, he deus groet eun toull frank;
» Dre an toull ez eo bet an nor haour digoret,
» Ar Gwir gant an Nerc'z-goue eur wech c'hoaz 'zo
» trec'het!

Hag an hailloned lous o deus, en ti Doue,
Teulet o fao hudar war bep tra, peb dauve...
» Emaez ar gristenien, an dour in o daoulagad,
» Gant doujan ha gant Fe a zastumans ervad
» Tammou an nôr draihet; hag evel relegou,
» E stardchout aneze war o c'haldonou...
» Bezan e vint dalc'hmad eun tenzor talvoudus,

yaouank da gonta pe seurt douetans en doa bet
Pol diwar-beun an aotrou a Lanveog, e eo gwelet
an intañvez o sevel d'he zro, hag e lavaras:

— « Bugel paour! da enebour eo a zo falvezet
gant an pellaat ac'hanout evit kregi easoc'h a ze
ez peadra. Bremaik e kredot ac'hanon, p'iam
bezo digaset dirazoc'h ar skoueder deuet er min-
tu-ma da zigas d'in ar c'helou, a-berz aotrou Lan-
veog, o deus pleged Plougastelliz ha Kraoniz.
» Hiviziken eta ar c'harterioù-ze a zo gounezet d'in. »

Evel eur goumoulen a drezas spered Thereza
hag e oa darbet d'ezhi koueza d'an douar.

Setu ma oa digaset ar skoueder, dre urz kontez
Monfort.

Ar skoueder yaouank na gredas ket nac'h ar
wirionez, gant aon da veza kastizet diwezatoc'h,
hag ousspenn-ze, e spered a eo skoet o welet diraz-
zan an demezel a yoa bet laeret gant e vestr. Hag
e lavaras rag-eün kement en doa great an aotrou a
Lanveog.

— « Va mestr, emezan, a ouie ervad e savche
an holl Blougastelliz en e eneb, mar en divije
klasket mont d'ho maner gant an aimon, ha setu
perak e kavas gwelloc'h kas eur c'hannad da
lavaret d'eo'c'h edo gwaskedet ho tad ama. Lavaret
mat en doa u'ho piye ket gallet ehom hep mont
d'e welet kerken, ha neuze e vije eas d'ezan
kregi en ho madon. Eat mat eo e vennoz da benn.

En despet d'ar boan o deus kemeret he servi-
cherien, Plougastell a zo bet trec'het. Gouarnour
ho kastell a zo en disheol, klozet mat, hag ar vro
a-bez a zo brema dindan gallowd va mestr. Roet
en deus da gredi d'ho kwizien (vassaux) e oa maro
Pol, ha c'houi, emeza, a yoa eat kwit evit atao.
» Hag abalamour da ze, n'en deus enebet, da lavaret
enebi... Ha neuze, Petra c'hallfed da ober brema
eneb an hini a zo deuet da veza perc'hen ar c'has-

A zigaso sonj d'e eus eun devez skrijus;
» Bezan vefont ousspenn eun testeni a Fe,
» Hag a lako bepred loc'h en o bugale.
» O bugale laro, gant eur galon gristen
— Hon zad koz a stourmas start evit o c'hreden;
» Pa fellas d'an dud fall labea an iliz,
» Hon Zadou a zavas da zifenn ar Frankiz!
» Enor, enor d'ezel! O bugale vihan,
» A ouio, evelté, mar ve red, mont d'an tan...
» Biken, en Breiz Izel, nan, ar Fall ha gludo,
» War roudou hon zad koz dalc'hmad ni a gerzo!
» Ni a zo bugale d'an dud a zoug blea hir,
» N'hallont bezan trec'het p'o deus laret o gir!
AR YEODET.

GOULENNIT

E Ti-Moulez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, ball Charner, SANT-BRIEG

An Arist katolik, gant an aotrou abad	
Breiz, gouenn kartoniz ha skeudennon (gant ar frejou-kas)	4 real.
Prezegon war Buez ar Vro, gant Job an Her...	2 gweñneg.
Hent ar Groaz	3 gweñneg.
Buez sant Anton a Badou	5
Pedennouigou ha ketennadurez d'ar bugale	2
Merzerenti an Tad Perboar	1
Buez an Tad Perboar	1
Al lez	1
Meulodi al labourer	1
Gwez sant Mili	1
Gwez sant Kovez (skeudennet)	1
An diaoul-paotr	1
Kan an Islanded, kentoc'h mervel. Peñen ar vartoloded, Gwez sant Kemo, hag all...	1

Eun diskenn war ar priz evit meur a hini.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant: F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

tell?... »
Thereza a oa mantret o klevet kement-all. Gwelet
a reas dioc'h-tu peger bras droug a yoa great
d'ezhi. Petra da ober? Da beleac'h mont? Evel a
lavare ar skoueder, ne dalvezche da netra en eun
zevel oc'h perc'hen nevez ar c'hastell.

Ar plac'h yaouank a ouie ervad e vije a-walc'h
eviti mont d'en em ziskouez d'he Plougastelliz evit
ma 'z aje an hoil vazed d'he heul. Baron Plougastell,
hag hen hepen, a c'helle dont a-benn eus
eur seurt labour; ha p'eo gwir ne ouied penn
ebet dioutan, ha marteze abarz pell ne vije klevet
hano ebet dioutan. Ha goude m'en divije gallet
mont da zifen e dra eat dindan gallowd Monfort,
an henor en divije hazret anezan da vont, rak
a-du edo gant Charlez Blez, ha d'ar mare-ze zoken
edo an diou arme o vont da steki an eil ouz eben,
ha goude e vije gwelet gant piou ez aje ar gouid-
Stag e oa eta.

Janned Monfort a lavare a-walc'h e roje urz d'an
aotrou a Lanveog da vont eus a Blougastell. Ho-
gen, Thereza a zante mat ne vije ket sentet oc'h
he urz. Nec'het bras oa.

Ar c'hontez, kalon vat he devoa, a eo skoet o
welet ar plac'h yaouank en eur seurt kuden;
kinnig a reas d'ezhi eun ti kaer en Hennbont.
Houma avad a c'houlennas ma vije lezet da vont
da Gemperle, gouarnour ar gear-ze, emezi, a yoa
kar pell d'he zad. Janned a aotreas d'ezhi gant pli-
jadur ar pezh a c'houlenne.

— « It, emezi, o lavaret kenavo d'an demezel,
it, ha dalc'hit sonj vat eus a gement-ma: Ma teu
Doue da rei d'in an trec'h, me ho skoazello kement
ha ma vezo em gallowd. N'ho'c'h ankou-
nac'hain ket. »

(Da heuilh). KLAODA.

EBREL

Bloavez gliz,
Bloavez gwiniz.

Pask pe Kazimodo,
En Ebrel, sur a vezo.

Pask gleb ha Morlarjez kailharek,
A lak an arc'h da veza barrek.

Sant Jorjik, diwar e dorchen,
A lak ar vioc'h da vresken.

Pa vez glao da ouel Mark,
E kouez ar c'higneiz er park.

Da ouel Mark,
Mern-vihan d'ar park.

Mouchit mat ho kôle bihan,
A hent-all ho po doan gantan.

Hualit mat o marc'hig, divank,
Pe en em veuzi ray er stank.

J. G.

GIZIOU DA VIRET

Bennoz Doue, trugarekaat, trugarez-merci,
remercia (!)

*Kasit, Breizis, er meaz ho ti
Gizioù fall ha neceenti !
(PERNIZ-BANZ)*

Amzer a zo bet, hag an amzer-ze n'ema ket c'hoaz gwall-bell diouzomp, ne deo ket c'hoaz, zoken, tremenet evit an holl Vretoned, dre c'hras DOUE ive, evelkent; ya, amzer a zo bet, an holl dadou ha mammoù breton diwar ar meaz, e Breiz-Izel, a zeske o bugale da drugarekaat. (ha n'eo ket da *remercia*, egiz ma lavar brema ar c'hallegerien hanter vourc'hizien), a zeske o bugale, a lavaran, da drugarekaat gant ar gerioù-ma : *Bennoz-Doue d'eo'h; ho trugarekaat a ran; trugarez d'eo'h.* « Lavarit bennoz-Doue d'an aotrou Person, va mabig, » eme ar vamm d'he bugel. « *Trugarekeit anezan, va c'hrouadur. — Bennoz Doue, aotrou Person ! — Lavarit evel-se, va faotrig, hag e vezot eur paotrig mat.* » Hag ar bugel sentus a lavare evel-se, hag ec'h en em voaze da lavaret evel-se d'an aotrou Person, d'an aotrou Kure, d'ar yeotud, d'ar voereb, da Ber, da Fanch, d'an holl. Evidou-me am eus c'hoaz sonj n'eo bet desket d'in lavaret nemet evel-se.

N'em eus klevet hano eus ar gerioù *merci* ha *remercia*, nemet pa 'z on deuet da zarempredi an dud a c'halleg.

Allo ! Bretoned, lezit a-gostez ar gerioù gallek-se, *merci* ha *remercia*, ha distroït d'ho kizioù koz. *bennoz Doue, trugarekaat, trugarez.* Bennoz DOUE ! pebeuz ger koant ha kristen war eun dro ! Pebeuz ger mat da eun den ! Eur beden eo a rit evitan, oc'h e drugarekaat, hag eur beden eus ar re gaëra. « Bennoz DOUE d'eo'h, va den mat ! » da lavaret eo, « me a bed Doue da roi d'eo'h e vennoz. » Petra zo gwelloc'h eget bennoz an Aotrou DOUE, hag evel-se petra zo gwelloc'h da c'houlou evit eun den ?

Ha neuze, va mignonned, gouzout a rit petra livirit o lavaret *bennoz Doue*. E leac'h *merci* ha *remercia*, petra ziniñ ar gerioù-ze evit eun niver bras ac'hanoc'h ? Netra; ne ouzoc'h ket petra livirit, gwenn pe zu, oc'h o lavaret, na ne ouzoc'h.

Me 'm eus sonj da veza klevet va zad oc'h ober gwap eus ar re a lavare *merci* d'ezan, e leac'h *bennoz Doue, trugarekaat*.

Va zad, gras d'e ene da veza pell a zo er baradoz ! ne oa nemet eur Breton hep deskadurez, ha ne garie koms nemet ar brezoneg. Eun tam-mig koz galleg en devoa desket ive epad n'edo er zervich diindan Napoleon; hogen, skiant a-walc'h en doa evit n'hen dispaka nemet oc'h red. Nan, ne rea ket egiz kals, ha pa ouzont eun tamm koz galleg bennak, a zo mall ganto diskouez d'an holl ec'h ouzont galleg fall. Lakaat a reont evel-se da ober gwap outo pa vez troet ganto o c'hein, ha da anaout o zotoni, da welet ne dint nemet speredoù avelek, c'houezigellou.

Sonj em eus eta da veza klevet alies va zad oc'h ober gwap, en eur c'hoarzin, oc'h ar re a lavare *merci* d'ezan, e leac'h *bennoz Doue, pe trugarekaat.* « *Merd sic !* » eme va zad, oc'h o difreuzi. O ! dalc'hit ho *merd sic* ganeoc'h, debrît dioutan ha gît kofad, mar hen kavît mat. Evidon-me n'her c'haran ket. » — « Mat ! eme an hini taget, ma n'eo ket mat *merd sic* evidoc'h, egiz ma livirit, *bennoz Doue d'eo'h* neuze. » —

« A ! bennoz Doue, eme va zad, a zo mat da gaout atao. Ne refuzan morse hennez. »

Lavaret em eus : Ar ger *bennoz Doue* a zo eur ger kristen, eun doare dereat ha kristen da drugarekaat. E leac'h ar gerioù *merci* ha *remercia*, fourret warnomp gant ar c'hallaoued, kemeret diganto gant tud dieves eus hon touez, a zo kentoc'h gerioù païan.

Gouezit penaos ar c'hallaoued (me fell d'in lavaret ar re difeiz ha dizoueoned, hag an niver eus ar re-ma a zo bras, e-touez ar vourc'hizien pinvidik hag ar skrivaniourien, dreist-oll, o c'havot,) o deus, egiz pa lavarfen, touet hag a labour endra c'hellont da ober ankounac'haat DOUE war an douar, da vonga ar feiz e kalonou ar gristenien, da ziskarr an Iliz santel katolik ha da zistruja ar relijion venniget roet d'eomp gant hor Zalver Jezuz-Krist. Evit ober ankounac'haat DOUE, petra a reont ? Lemmel e hano santel eus a c'hinou an dud, maia ma c'hellont, o lemmel anezan eus an holl lavarou mat ha kristen-ze en em zervich an dud anezo, a vare, pe evit goulenn digant Doue eur c'hras, pe evit e drugarekaat. Sonjal a reont o lemmel hano Doue eus a c'hinou an dud, e lemmet ar zonz anezan eus o spered. Ne faziont ket tre e kement-ma : rak unan ha ne glever mui koms anezan, unan ha ne weler mui e hano e nep leac'h, ne zaleer ket d'hen ankounac'haat.

Evel-se 'ta, ar c'hallaoued fall ha difeiz e komzomp anezo brema, ne fell ket d'ezo e ve klevet hano a Zoue e nep leac'h, nemet beza e ve evit gwall goms dioutan, e ve skrivet e hano e nep leac'h, nemet el levriou hag er c'hazetennou el leac'h ma vez blasfemet. Ha n'o deusi ket great eul levr bras, levr al lezennou, hanvet ar « c'hod » ? Ac'hanta, ne gaver ket hano Doue skrivet eun eur wech, ha pa ne ve ken !... Egiz mac'h oufe beza lezen vat ebet, na lezen fur ebet, ma n'eo hi savet war Zoue ! — Mes koms eus a Zoue evit e drugarekaat, evit e veuli, evit e bedi, o ! ze a zo eun torfed dirak o daoulagad. Grit an torfed-se dirazo ! Ya, komzit, gant doujanz, eus a Zoue dirazo, grit d'o diskouarn klevet an hano hegasus-se, diskouezit d'ezo e kredit hag ec'h esperit ennan; ma n'ho krougont ket war an heur, e ouezint, da vihana, en em venji warnoc'h, oc'h ho kervel, etre o dent, ma ne gredont ket en ober a vouez uhel : bigod, ravoder, diot, paizant superstitius ! Eur Gall eus ar sklisen-ze, mar en deus d'ho drugarekaat, ne gomzo ket d'eo'h eus a Zoue, bezit sur, en e drugarekaad. Lavared a raio d'eo'h, ha diwar beg e deod hepken, ar ger seac'h ha dic'hras, *merci*. E leac'h ar Breton kristen ho drugarekao e gwirionez, eus a oueled e galon, en eur bedi an aotrou Doue da venniga ac'hanoc'h evit ar vad ho pezo great evitan. Klevit-hen : « Bennoz Doue d'eo'h, Aotrou ! Mil bennoz Doue d'eo'h, va den mat, da veza great kement-se evidon ! Bezit benniget gant Doue, c'houi, ho tud hag ho traou ! Ra skuilho Doue warnoc'h, Itron, e vrasa bennoziou ! Ho drugarekaat a ran eus a greiz va c'halon evit an holl vad hoc'h eus great d'in ! »

Setu aze komzou kristen; setu aze gwir zoareoù da drugarekaat eur c'hristen, ha zoken eur païan honest.

(Da heuilh).

KLAODA.

KLASK HEP KAVOUT

D'eur Mignon.

Hirie, an darn-vnien eus an dud a weler
O klask evurusted ebaz eu pep micher,
Klask 'reont en aner ar pez na gavont ket,
'Rak an evurusted er bed-man n'eman ket.

Nag e ve roet d'eun den an holl plijadurioù,
Hag an holl binvidigez, da heul an enoriou,
Roet d'ean da dibri-eus an debrach gwellaù,
C'hoaz ne vo ket evurus, o nan, 'barz ar bed-man.

Roet d'ean bue hir, gant gwreg ha bugale,
Da gât doujanz evitan ha d'hen karout bemde,
Furnez, yec'hed ha skiant, ha bep morse klenved,
E galon 'vo ket leuniet gant an evurusted.

Na pa 'n eve ar galloud 'n eus an holl rouane,
Ha nerz an holl soudarded a ve en e arme,
Ar skwizder, ar rann-galon lemmet c'hoaz digantan,
Gant kement-se ne vo ket evurus er bed-man.

Nan, biken an den kez n'halla bezan kontant,
Gant e holl blijadurioù, e aour hag arc'hant,
'Rak Doue an eus miret 'vitan 'n evurusted,
Da rei n'e Varadoz d'ar re, do goneet.

Eul Lenner.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Da Lourd ! — Ar bla-man ec'h a tud da Lourd,
hag a bevar c'horn ar bed, seurt ne oa bet biskoaz.

Eus a viz ebrel da viz gwengolo, e konter e
tigoueo en Lourd ouспен tri c'hant tren pelerined.
Enor d'ar Werc'hez ! Ra deuo c'hoaz eur wech
da flastrañ e benn d'an diaou !

Ar franmasoned hag ar skoliou. — Ar franma-
soned a zo kas kemer an holl skoliou evite. C'hoant
o deus da harz ar veleien d'ober skol, c'hoant
zoken da harz tadou ha mammoù da gelen o bu-
gale, rak eul « loj » an eus goulennet ma n'halle
ar gerent kemer, da skola o bugale en o zi, nemet
mistri diwar dorn ar gouarnamant.

Ar franmason, ma ne ve ket harzet outan, a
dago pep liberte, an eil warlerc'h eben.

An eiz devez warnugent. — Peurc'hret ha
peurvotet eo al lezen war an 28 devez. Hiziviken,
ne vo gret ken hemet *tri de warnugent* 'vit ar
c'hentan gwech, *seitek devez* 'vit an eil gwech, ha
nao devez, elec'h trizek devez.

Ar c'hoari peziou brezonek o kreski dre ar
vro. — Brao eo ganimp klevet kelou, a bep tu, a
bôtred yaouank kalonek hag a laka o foan hag o
amzer vak da ziski ha da brienti peziou-c'hoari
brezonek. Darn eus ar peziou-ze a zo bet c'hoariet
da valarje; re all bravoc'h c'hoaz, a denio goude
Pask.

Betek en *Anje* ez eus bet c'hoariet eur pez bre-
zonek, a drugare d'an Aotro abad Kervella, beleg
ar Vretoned ! Bec'h d'al labour, pôted ! Mar karit
kaout kanaouennou da ganan ive, goulennet di-
gant *Kroaz ar Vretoned*, hag e vo roet d'ac'h ar
marc'hamata ma vo gallet.

KELEIER EUS AR VRO

(Kendalc'h)

LOGIVY-PLUGRAS. — Maro war an
hent. — Charles Morvan, oajet a 69 vla, a zo
marvet war an hent o vont da Werliskin. E gorf
a zo bet kavet gant tud o tremen.

QUEMPERVEN. — Tân-gwall. — An tân
'zo bet kroget en ti an otro Grand, marc'hadour
en bourk Quemperven. Eun den, siouaz, a zo bet
devet.

TONQUEDEC. — Plac'h yaouank beuzet. —
Jeanne-Marie Chastelin, oajet a 19 vla, a zo 'n
em vezuet en ster al Leger, hep ma ouier dre
beno e c'hoarvezet ar gwall dol-ze. Ar plac'h-
man ne vije ket dalc'hamad he spered ganti.

GOULENNIT

E Ti-Moulez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, ball Charner, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotrou abad BILER, golouenn kartoz ha skeu- dennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegenn war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gweneg.
Hent ar Groaz.....	3 gweneg.
Bue sant Anton a Badou.....	5 —
Pedennouigou ha keleennadurez d'ar vugale.....	2 —
Merzerenti an Tad Perboar.....	1 —
Bue an Tad Perboar.....	1 —
Al lez.....	1 —
Meulodi al labourer.....	1 —
Gwerz sant Miko.....	1 —
Gwerz sant Konevi (skeudennet).....	1 —
An diaoul-paoz.....	1 —
Kân an Islanded. Kentoc'h mervel. Peden ar vartoloded. Gwerz sant Kemo, hag all.....	1 —

Eun diskenn war ar priz evit meur a hini.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Kroaz ar Vretoned

KOUZANANCKOU

16 real ar bloaz evit Broz ha Bro-C'hall.
2 skodet evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

KENEZOUR

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

KIBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer zero.

Ar brezonek hag feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURZ AR GAZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekzoio a Vreiz.
FURZ AR GEZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'h at.
Ouspen ar Vez, e ve Pec'hed
MILAN.

EGWERZ: Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skriuan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

Aluzennoù 'vit « Breuriez ar Brezonek »

An aotrou Coroller.

10 kwenneg.

BREURIEZ AR BREZONEK EN PLOUBÉR

Eur gouel brezonek roet gant *Breuriez ar Brezonek* a vo en Ploubèr an 10 a viz mae.

Beau vo lennadeg vrezonek etre ar vugale 10, 11, 12, 13, 14 bla, ha prijou *evite holl*, pep-hini herve e zeskamant.

Beau vo c'hoaz kalz a dreo-all; laket vo aman, eiz de arôk, an tenor eus ar gouel-man, a vo zur unan eus ar re gaeran gret betek-hen gant *Breuriez ar Brezonek*.

An holl vugale a zo en *Breuriez ar Brezonek* o devo lod er gouel-man, rak bilhejou c'hoarizac'h (pe tombola) a vo kemeret war hano bugale eus Prat, Peurit, Plijidi, Carnoet, hag ar pemzek parouz-all o deus bugale en *Breuriez ar Brezonek*.

Gant se, kemeret vo bilhejou war hano:

Louise Bonhomme, eus Carnoet; Maria Potin, eus Coatrèven; Marie Rouzault, eus Cavan; Yves Bercot, eus Duault; Joséphine Duchêne, eus Goudelin; Marie-Yvonne Balcon, eus Kervaria; Marc'ellin Kerbrat, eus Loc-Eguiner; Joséphine Briand, eus Lanviliu; Pierre Le Floch, eus Plouagor; G.-M. Corlouer, eus Pleuvian; Victorine Cathou, eus Peurit; Apolline Adam, eus Kergoado; Anna Le Guen, eus Plougonver; Joseph Boucher, eus Plounez; Joseph Béche, eus Plijidi; François Hénaff, eus Pludual; Joseph Jouan, eus Sant-Jili; François Moreau, eus Sant-Norgant; M. Labbat, eus Sant-Servez; Désiré Billon, eus Trézélan; F. Bonedec, eus Trebrivan; Léontine Le Bellec, eus Tregrom; Julie Rivoallan, eus Yvias.

Tri warnugent bilhed a vo kemeret eta 'vit ar vugale. Kaset vo d'e, ar re ane a c'honeo, ar pez o devo goneet.

Lec'h 'zo hanvet merc'hed ar wech-man vo hanvet potred 'benn ar gouel kentan, hag evelse ive 'vit ar merc'hed.

N.B. — Ar zun a deu vo rentet kont aman eus labour *Breuriez ar Brezonek*, eur bla so.

HANOIO AR VUGALE

A ZO O STUDIAN 'VIT GOUEL

BREZONEK PLOUBEZR

Pötréd. — Joseph Dantec; Alexandre Diouris; François Guyomard; Y.-M. Houdot; Pierre Roudot; Auguste Ollivier; Allain Roux; François Menez; Lucien Tanguy; Désiré Turpin; Arsène Mestr; Alexandre Moign; Joseph Marrec; Pierre Kerleau; Emile Moign; Jean Martret; Jean Ollivier; L. Impalaër; Y.-M. Droniou; Y.-M. Salpin; Y.-M. Lagadec; Armand Lamour; Auguste Adam; Y.-M. Corollou.

Merc'hed. — Maria Callac; Marie Lourec; Léocadie Bonnicc; Joséphine Dred; Marie-Anne Lan; Célestine Landois; L. Impalaër; Marie Turco; Thérèse Bergot; Anna Bihan; Maria Bihan; Jeanne-Marie Donval; Anastasie Gall; Jeanne-Marie Goff; Jeanne-Marie Hamel; Yvonne Lourec; Louise Kerroux; Jeanne Jaouen; Léontine Hénaff; Louïse Men; Maria Ollivier; Eugénie Person; Anne-Marie Prigent; Jeanne Ropers; Françoise Péru; Joséphine Nédelec; Maria Rallec; Jeanne Guerniou; Célestine Ollivier; Maria Kerleau; Marie Guern; Marguerite Lopez.

PAROUZIOU EVURUS

„An neb a red eun tam dre ar Vro a chom alies souezet o welet en petore stad eo kouezet hirie eur rum eus hon parouziou, kenkouz gwechall koulskoude.

C'hoarvezont e ra gant ar parouziou evel 'gant an dud hag an tiegezoù.

Diand alan bulumus an amprevan a hanver *Ar politik*, an darnvuian ané o deus kollet o c'haerder hag o brud vat.

An dud enné a 'n em dag, a 'n em draih hag a 'n em debr. Ar politik an eus dizec'het enné pep karante, lazet pep doujanz, mouget pep plijadur.

Ar parouziou-ze n'o deus ken a gristen nemet al liou, a vretou nemet an hano; ha, gwasan pinioun eun den kalonek eo bezan barnet da vevan en eur seurt galeou!

Laret penós aman kont evelse en pep parouz eus hon bro Breiz, e ve eur pec'hed bras.

Daoust da niver ar parouziou dallet ha gwasket, e chom c'hoaz, a drugare Doue, eun nebedig parouziou evurus hag a ra enor d'o zud; eun nebedig parouziou hag a zo, evel pa lavarfen, ken lies a liorz Baradoz...

Seulvui e tenont tano, seul-vrasoc'h eo o zalvoudgez ha seul-gaeroc'h ar skouer vat a roont. Int eo ar « Roc'h » a zalc'h penn d'ar môr, an tour-tân a hencia al levier ankeniet; ha, ken divlas eo bev an eur barouz fall, ken dudiou ive eo tremen ar vuez en eur barouz fur.

Ne garfen ket eta tremen hep ober eur pennadskrid diwar-benn ar barouz vat.

En gwirione, ar parouziou fur o deus holl lezet em c'halon a Vreizad eun envor ban dous, eur sonj ken tener, ma karfen rei an evurusted-ze da danva d'am c'henvroiz. Po devo hen-taneveet, int ive a laro ganin: Ya, aze 'man an hent gwirion... Aze 'man ar Furnez!

Ar pec'h n'hall dont nemet eus an unvaniez; an unvaniez a deu eus ar garante, hag ar garante eo mammenn an evurusted.

Evel ne gaver gwir beuc'h nemet en Doue, ar parouziou mat a zo chomet da gentan, ha dreist heb tra, doujous d'ar Fe, diaze heb evurusted.

Eno, hag eno hepken, eman o nerz didrec'hus. Er parouziou-ze, ar beleg a zo karet, an iliz 'zo darempredet.

Holl dud ar barouz, paour ha pinvidig, na reont nemet eun tiegez, unanet dalc'hamad er boan koulz hag er blijadur.

Er parouziou-ze ar Gasoni hudur n'eo ket anveet hag en zellou heb den, koz ha yaouank, e c'hallfed lenn hep son: Peuc'h ha Levenez!

Ne fell ket kredi, koulskoude, penós eur seurt parouziou a zo evurus hep goit d'e hag a vir o

evurusted hep poan.

Skouer divalo ar parouziou fall a ro d'ezé eur gentel.

Pegwir ar gasoni na groun netra, pegwir an dizurz a had dre holl dismantr ha trubuilh, dirak doare mantrus c'hoarezed penn-follet, ar parouziou fur a lavar: Ne fell ket d'imp koeza en hevelep stad! Ha tud pep parouz vat n'o deus neuze nemed eur zoursi: henvel tud reiz d'o ren 'barz an hent eon!

Rak kaer en do ar beleg bezan doujet, kaer en do ar garante ren en touez an holl, ma teu ar blei d'en em zila entouez an denved, ma teu enpad an noz ar Fall da hada lonzou el liorz ar barouz, an denved a vo prim dianket hag ar gwiniz ken buhan-all mouget.

Dre-ze, er parouziou fur, an ibilhen-treuz n'hallont ket kavout o zro.

Skiant-prena hag anaoudegez an dud a oar pellaet ané diouz ar c'hargou.

En penn eur barouz e fell tud, ha nan gwided; fellout a ra poell ha nan trous.

An darnvuian eus ar skipardet a ra breman kement a vech da gavout ar c'hargou, n'o deus c'hoant nemed unan! Ober trous ha diskouez d'o c'henvroiz pegen zod int!

Dever heb Breizad eo ober d'e eur brezel didrue, evit ne denio ket ar politik da derri d'imp hon diouvrec'h.

En diazev ar politik hon deus d'ober labour talvoudus a-walc'h!

Miromp tud a galon, gwir Vretoned ha kristenien en penn hon farouziou, hag hon farouziou — en desped d'al tamponed hag evit mad an holl — a viro c'hoaz kaerder, evurusted ha brud vat!

AR YEODET.

PENOS DONT A-BENN EUS AR MERIEN

Hervez ma lenner, e kaver ane el liorzou, en tiez, en arbeliou ha betek er bara. Ma ho peus merien en ho ti, en hoc'h armel (pe pres), kemerit eur plad ha lakit e-barz deliou glas eus an huelen c'houero, (absinthe) er stal izela eus hoc'h arbel. (ma 'z eus merien e-barz), skuilhit war an deliou-ze eun nebeut douz bero, ha serrit raktal dor an arbel evit ma chomo ar c'houez krenv eus an huelen e-barz. Ar verienen eo tano he fri, a glev c'houez buhan ha buhan. Evel c'houez an huelen c'houero na blij tam d'exi, dizale e klasko an tec'h, an hent da vont kwit, pell eus ar c'houez-se. Ar verienen a zo ouспен eul loenig kizidik ha mat evel ar c'hi fouetet da zerc'hel sonj. Dre-ze, ar merien, eur wech dilojet eus o ti, ne deuit mui wardro.

An eil lonzou a zo kaletoc'h. En hanv, n'eo ket rouez gwelet merien o redek gant prez, ha war an douar ha penn-da-benn gant ar gwez frouez, dreist-holl. An holl a lavar e reont, e-lec'h vad, drog d'an traoigou tener, ha betek lakat ar gwez da zizec'ha war o griziu ha da vervel. Setu ama petra heller d'ober. Kemur 50 gram kastounadex (cassonade), o lakat war eur plad ha lakit e-touez ioul-tourmantin (essence de térébenthine): kemmeskit anezo ken ho pezo great ganto eur youden, eur pasteiz ha ne vezo ket re galet. Kasit raktal ar pladad da draon eur vezan a zo enni merien, lod o pignat ha lod o tiskan. Ar verienen, ouспен ma sant c'houez a-bell, a gar an traou dous, al lipouzevez; dre an hent-se ne zaleint ket da zont a vanden da glask pep-hini he zam eus ar pasteiz. Da heul ar sukr hag a garout fors, e tebrint tourmantin hag a zo eur poezoun. Mervel a ray diza le al loenigou kez, an eil war lec'h eben!

J. C.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

Ar brezonek hag feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURZ AN GRIZ.
Gant brezonek, eo douet ar feiz.
Gant ar gallekano a Vreiz.
FURZ AN GRIZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoned
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma vo trec'het.
Ouspen ar Vez, e ve Pec'h e dt
MUS.

RENERDOEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMMANOÙ-KONVERZ

AN AOTROU TESSELIER, 27, ball Charner, a zigemer arzo.

E GWERZ : Grammsire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège
Notre-Dame, Guingamp.

Rôk ar Votadeg

Lar d'in 'vit piou a votez, me laro d'it piou out,
Breton stag ouz da greden, pe losk ha die'hallout !

Pa c'h eio da zorn er vouest, 'vit stur ha 'vit golo,
Doug 'n ez kalon sonj da Fe, da Vreiz ha da Dado !

Eur c'hrog etre bugale « Breuriez ar Brezoneg »

En enor da ouel sant Ervoan, 19 a viz mae,
eur skrid a zo roet d'ober d'ar vugale, war an
dauve-man :

SANT ERVOAN HAG AR C'HOULMED

Pa oa yaouank sant Ervoan, e kasas e dad
anean da vesa an ed ha da harz ar c'hudoned (pe
pichoned) diwarnan.

Erwanig a yeas raktis d'ar park, hag o vean
zerret mat ar gled, e teuas d'ar gêr.

E dad a c'houlas digantan kelo eus an ed :
« O ! emean, prennet mat 'm eus ar gled ; ha gant
se, ar c'hudoned n'efout ken er park.

An tad a red d'ar park, ha petra wel ? Eur bagad
kudoned o tarnijal tro war dro d'ar c'hleunioù,
mes hini ane na deus er park.

Da bep hini eus ar vugale da gontan kement-
man hirran ha braoan ma hallo, d'hen skrivan
reiz ha lennabl mat, o sinan e *hano*, e *oad*, hag e
chomaj e penn e labour.

Kas al labourioù d'an otro Moal, 27, ball Char-
ner, Sant-Briek.

Adalek breman, e hallomp lavaret e vo ar priz
kentan eur skouden gaer (pe statu), skouden sant
Ervoan. Bean vo c'hoaz p'ijou-all ha tolennoù
d'ar re 'devoit ket bet a briz. An 31 a viz mae a
vo an termen diwean da gas al labourioù.

BREURIEZ AR BREZONEG

Gouelioù koz. — Bugale Breuriez ar Brezoneg.
— Gouelioù neve.

Rôk kregi gant ar gouelioù neve, ne vije ket
fall ober eur zell war hon lec'h, ha gwelet en pe
stad en em gav hon Breuriez.

Aboue an 11 a viz c'houevrer artene, betek
hirie, Breuriez ar Brezoneg he deus gret c'houec'h
gouel :

En Peurit, an 11 a viz c'houevrer. Bean oa
eno 38 a vugale, 14 pôtr ha 24 plac'h. Roet e oe
14 priz ;

En Keriti, an 20 a viz mae. Bean oa eno 32 a
vugale, 12 pôtr hag 20 plac'h. Roet 'oe d'e 16 priz ;

En Plouagor, ar 4 a viz est. Bean 'oa eno 26 a
vugale, 12 pôtr, 14 plac'h. Roet 'oe 14 priz ;

En Callac. Da Gallak, ne oe gret nemet kas ar
prijou. Bean oa eno 9 pôtr hag 8 plac'h ;

En Prat, an 13 a viz here. Bean oa eno 9 pôtr
ha 24 plac'h. Roet e oe 33 priz ;

En Kervaria-Sulard, ar 5 a viz genver. Bean
oa eno 17 pôtr ha 26 plac'h. Roet e oe 25 priz.

Ouspen, gant Nedeleg, Breuriez ar Brezoneg a
reas eur skrivadeg brezonek etre ar vugale. Unan
ha tregont bugel a gasas labourioù.
Tri briz a oe roet hag 28 accessit.

Mes aboue miz genver, Breuriez ar Brezoneg,
evit dec'hel tostoc'h d'ar vugale, hag ober d'e
derc'hel da leun, ha, gant leun, deski ive skrivan,
he deus savet koumananchou *8 real da Groaz ar
Vretoned*, evit ar vugale oc'h ouzout leun, adalek
10 vla betek 14 vla. Setu aman, hirie an de, ar
vugale o deus roet o hano hag o eiz real.

Eus Carnoet, 12 ; eus Coatreven, 1 ; eus Cavan,
1 ; eus Duault, 1 ; eus Goudelin, 1 ; eus Kervaria,
18 ; eus Loc-Eguiner, 3 ; eus Lanvilin, 6 ; eus
Plouagor, 4 ; eus Plouvian, 2 ; eus Peurit, 22 ;
eus Prat, 35 ; eus Plougonver, 2 ; eus Plouez, 1 ;
eus Plijidi, 19 ; eus Pludual, 1 ; eus Sant-Jili, 1 ;
eus Sant-Norgant, 3 ; eus Sant-Servez, 1 ; eus
Trezelan, 3 ; eus Trabrian, 1 ; eus Tregrom, 3 ;
eus Yvias, 1 ; eus Pleuveur-Bodou, 18

Setu eno eta 24 parouz hag o deus etreze en
Breuriez ar Brezoneg 160 bugel.

Hogen, bean 'zo 187 parouz o komz brezoneg,
hag elec'h 142 bugel, eo 2.000 * a dleje bean en
Breuriez ar Brezoneg. Dont a refont, a dam da
dam, mar be bolante Doue, ar Werc'hez ha sant
Ervoan.

Ha breman, setu adarre ar gouelioù o hadkregi
gant an neve-amzer.

Bean 'zo da vean :
En Plouber, an 10 viz mae ;
En Sant-Agathon, an 17 a viz mae ;
En Lomikel-en Trez, ar 7 hag an 8 a viz mae ;
En Pleuveur-Bodou, an 8 a viz even ;
En Plounerin, en miz gouere ;
En Peurit, en miz gouere ;

Mignoned ha lennerien ger, c'houi holl, Bre-
toned vat, hag a garje gwelet, en amzer da zont,
Breiz-Izel henvel ouz ar pezh a oa gwechall, si-
kouret Breuriez ar Brezoneg, hag a boagn gant
bugale Breiz abalamour eo en dorn ar vugale
eman an amzer da zont.

Kaset hoc'h aluzen da Vreuriez ar Brezoneg,
ma hallo derc'hel gant he labour zantel ha kas,
hep dale re, an ero da beun.

ALL. — Eur mignon a lavare d'imp an de-
all : Me, emean, elec'h rei 'vit prijou da vugale ar
c'haltekiz levrioù a bep seurt, a roo d'e, adalek
breman, koumananchou *8 real da Groaz ar Vre-
toned*,

Setu eno eur skouer hag a zo da heuilh, rak 'vit
eur bugel breton n'eus ket gwelloc'h 'vit brezoneg
da leun, hag etouez an holl skridoù, n'eus na
gwelloc'h na digoustusoc'h evit Kroaz ar Vre-
toned.

Ouspen ar gazelen, eur c'haer a roer c'hoaz da
bep bugel, da zeski skrivan.

SEMINER PLOUGERNEVE

War don : Breudeur ni glev.

Bretoned, pebez glac'har a vantr hon c'halono,
O wet ar gasoni a zo 'peb lec'h 'n hon bro ;
O wet ar brezal digar, ar brezal ken spontus,
A rer d'hon relijion ha d'hon Zalver Jezuz.

En parouz Plougerneve, a-dandost da Rostren,
Zave gant aluzenno hon zadou koz kristen,
A zo en kreiz eur lanneg, eur c'hastel-kaer-meurbed ;
Netra nemed hen gwelet a ra d'in joastud.

Di kasec'h ho pugale 'vit ober o studi,
Ha diski d'e ho karout, ha dont d'ho enori,
Ha 'n eur garout ac'hanoec'h, karout ive Doue,
'Vit bean war an douar tud a wir garante.

Kalz zoken 'zo ac'hanoec'h, n'eus ket ken pell amzer,
'Oa ive o studian ebars ar Seminer.
Ha 'man bepred 'n ho kalon hag ive 'n ho spered,
Ar'zonj doue eus an ti ze lec'h ma oc'h bet savet.

Eno c'h eus kavet mestro leun a wir zantelez,
O c'halon a oa karget a denereidigez,
Diskouezet o deus bet d'ac'h hent an evurusted,
Ha setu aze perak 'maint c'hoaz don 'n ho spered.

Mes hirio, o Bretoned, hirie c'houi n'hellet ken
Kas ho pugale vihan d'ar Seminer kristen :
Rak en hon bro Frans karet, eur gasoni euzus
An eus dirollet dre holl an dud enep Jezuz.

Dre eur votadeg spontus, hon mestro a Bariz
O deus divizet laerez holl leve an Iliz,
Herve an torfad bras-se eo laeret Plougerneve,
Laket ernez ac'hane Mestro ha Bugale.

Ker Rostren 'n eus konsantlet lakat eun hospital
'Bars an ti kaer-ze zavet 'vit ober skol gwechall,
Ha gant dek benag a dud c'h eint breman d'abu-
zi Lofeiz bet zavet 'vit pemp kant den a studi.

Ha keit-se, hon bugale o devo naon, zur mat,
Rak diskadurez kristen i nan helfont ken kat,
Hag beleien d'o c'helen n'ho devo ket ive,
Pan eo gwir ez eo laeret kolaj Plougerneve.

Pedomp Doue, kristenien, 'vit ma turvezo c'hoaz
Digori d'ho pugale hag ive d'an dud veas
Ar Seminer biniget a ouelomp oll hirie,
Ar Golej-se ken brudet, kolaj Plougerneve !... .

Yves-Marie PRIGENT,
skolaer kristen, Penvenan.

Gizioù koz ha kristen hon Tadou

Kasit, Breiziz, er-maez ho ti,
Gizioù fall ha nevezenti.
(FURZ AR BRIZ.)

Da gizioù santel hon Tadou,
Dalc'homp mat bepred, Bretoned ;
Holl, e gousted hor c'halonou,
Dougomp d'ezo eur gwir respet.

War gomzou Jezuz, hor Roue,
Ar c'hizioù-ze a zo fountet ;
War bratikou Iliz Doue,
Ez int kalz pe nebeut moulet.

Sent Breiz-Izel, hor patroned,
O deus o desket d'hon Tadou ;
Hag ar re-ma, oc'h o miret,
O deus great eur bras gouindou.

Micomp-i evello, Breiziz,
Hag ar c'hizioù-ze a zougo,
A zougo bepred frouez a briz,
Frouez a briz aleiz en hor bro !

Ar Vretoned o deus kalz gizioù, kalz praktikou
mat, devot, santel, deuet d'ezo digant o Zadou.
Ar c'hizioù-ze a zo fountet, egziz ma leverer uhel-
loc'h, war gomzou Doue, ha moulet kalz pe ne-
beut war bratikou santel an Iliz. Sent Breiz-Izel,
hor patroned, o deskas d'hon tud koz. Ya, plantet,
lakeat int bet da ren en hon touez gant ar zent-se
a brezegas an Aviel d'hon tadou, hag a enoromp
brema evel hor patroned, sant Kaourintin, sant
Gwenole, sant Ronan, sant Maelgouar ha pegement
a re-all ! Hon tadou, hag o doa ar farnez da gredi
ar zent ha da zenti outo, a rea egziz ma lavare ar
re-ma d'ezo. Respet eta d'ar c'hizioù koz-se !

N'ouzon ket ha ni hag hor bugale war hon
lec'h a lezo da goueza gizioù mat hon Tadou. Ar

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANKOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
3 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

KUMNEROEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aezo.

Ar brezonek hag feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FERNER AN GIZ.
Gant brezonek en dud ar feiz.
Gant ar gallegoalio a Vreiz.
FERNER AN GIZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het.
Ouspen ar Vez, e ve Pec'he d'
MILIN.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

Aluzennoù 'vit « Breuriez ar Brezoneg »

An otro Coroller. 10 lur.
An otro Goasdoné, Gwengamp. 20 real.

Hon mignoned a wel e tosta ganimp koulz ar gouelioù hag an dispignou, dispignou gret holl evit ar Brezoneg hag ar vugale.

Trugare d'ar re o deus sonj ane !

BREURIEZ AR BREZONEG

ALIOU. — Al labour a oe roet d'ober ar zun-all da vugale *Breuriez ar Brezoneg*, war *Sant Ervoan hag ar c'houlmed*, a zervijo ar miz-man da *Loden ar Vugale*.

Kaset vo hep dale kaerou d'ar 25 bugel eus Pleuveur, Sant-Servez ha Tregrom o deus roet ar zun-man o hanoioù da *Vreuriez ar Brezoneg*.

Roll Rakprenerien " Bleunioù Yaouankiz "

An Aotrone :

Ar Men, person Kallak.	1 levr.
Blanchard, kure Kallak.	1
Gloan, kure Kallak.	1
An abad E. Touboulie, Kallak.	1
Gall, person Sant-Servez.	1
Lossec, kure Sant-Servez.	2
J. An Deuff, Goaslan, Sant-Servez.	1
Juluan Godest, « Ar Barz koz », Kallak.	1
Al Lay, Charles, Sant-Gilles-Pligeaux.	1
An itron Rolland, Konfort-Berhet.	1
Ar barz Taldir-Jaffrennou, Keraez.	1
De l'Estourbeillon « Hoël-Broerec'h », Gwened.	2
Rolland, kure, Ploulec'h.	1
Ar Barz Loëz Herriou, Lorient.	1
An abad Gouidec, kloer yaouank, Sant-Briek.	1
Le Clerc, « Kloarek-ar-Wern », Gwengamp.	2
Perrot, kure, Sant-Nouga (Finistère).	1
Ar Gall, Mestr-skol, Bear.	1
Leon, kure, Loguivy-Plougras.	1
Calvez, kure, Loguivy-Plougras.	1
An abad Alexandre, Loguivy-Plougras.	1
An dimezel Jeanne-Marie Goaréguen, Louargat.	1
An otro Besco, person Laruen.	1
An otro Bescond, kure Peurit.	1
An dimezel Helena Gweltas, Sant-Nikolaz-ar-Pelem.	1
An abad Auger, kure, Plounevez-Quintin.	1
An abad Al Lay, kure, Plounevez-Quintin.	1

PEURACHU EO :

PIPI GONTO

Murbailhou neve

gant E. AR MOAL (DIR-NA-DOR)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gweneg ar fréjou-kas, da laret eo nao gweneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet hag ien sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivan reiz ha sklér ar brezoneg.

Lenn aman, hep dale, eur pennad war al levr neve.

AR GORDEN PE AR GONTEL !

A-viskoaz em eus bet, evit an dud reiz hag eon, kalz a respet ; d'ar republikaned koulz ha d'an oll dud-all, am eus anveet ar gwir da zonzal hervez o bolontez.

Mes hag eo berr hirie ar vanden eus an dud-se leal ha gwirion ! N'eus ken dioute ugent dre gant !

Ar re-all, neuze, petra int ? Kredi a ran penôs n'o fachiñ ket, ma o lakan en renk ar milinoavel, en renk ar c'higi a dro hag a zistro kër prim, war dourioù Breiz-Izel ; hirie du, varc'hoaz ru, ha daou de c'hoaz goude, hep liou ebet ; hirie a-du gant ar wirione, ha varc'hoaz o devo poan o tiskouel d'imp seulio o boutou. Marmoujen ! Ah ! siouaz, niverus int hirie, n'hallan mui trei ma daoulagad diwar an douar, hep gwelet dre oll o zello faoz !

Beiou gwennet, seurt an eus anaveet, arók d'imp, an Hini a zo mestr ar bed.

Ya, an hano-ze eo o hini ! Ma gallfec'h lenn, en o c'halono, e welfec'h peger hudar, peger dispriuz int ! Breinadur ar pez a garfet, loustoni dre oll, ha netra ken ; mar gallfec'h lenn en o buez tremenet, e c'homfec'h sebezet...

O yaouankiz, en pelec'h eo tremenet ! En eun ti luch bennak, evel ar re a weler hirie, zoken en hon c'haerio ; eno eo o deus tremenet al loden vras eus o amzer, evel ar moc'h, lia na 'n em blijont nemed er fank !

An dud-se eo a welomp hirie en penn hon bro Frans. Adalek o bugaleaj e c'ont furmet evit ober al labour vras, int krog enni eur pennad so. Entre daou dorn ar seurt tud-se, eo eman breman stur hon bro, stur hag a zo gwall-flerius, hag a drugare Doue, dare da derri.

An oll a anave an dud fallakr-ze, ha na c'hortozont nemed an de, evit lakat Doue, Gwerchez ha sent ermaez eus peb iliz, evit lakat en o lec'h eur patron-all bennak, eur zant laik, hevel ouz al lapoused a gomzed ane raktal. Ne chom ken nemet kement-se da ober en hon bro ! An de vo graet kement-se, a gredan, e vo ouspen an dud vat o ouelan ; ar vour'hizien, hag ar gonsversanted a gano ive an alleluia war an tu gin.

Eur beleg laik bennak a zalc'ho lec'h ar beleg a zo breman, laket e vo en e blas eur skolaer bennak ha neuze e vo desket d'ar vugale... petra ? O c'hatekiz ? Nan ; desket e vo d'e kanau ar *C'harmagnole*, pe krial : *A bas la calotte ! hou ! hou !*... hag eun dra bennak-all eus ar c'hiz.

Setu aze, en herr gomzou, karg ar skolaer hirie, en hon farouziou, hada en kalon ar vugale sonjou eus ar falla, kounnar enep Doue, eneb ar veleien.

Kri eo evit an den a gemer poan da gompren eur seurt t'reo-ze, gwelet war betore tu ec'h a hon bro, ha gant peseurt ijin ec'h esaer hirie d'ala ha koll an dud, trei ar bed diwar an hent mat, hada en kalon ar mevel ar gounnar enep d'e vestr, sevel an oll enep Doue, setu micher an darn hirie.

Micher eun darn, abalamour ma welont, er stum-ze, gallout kreski o yalc'h. Ar c'hojou brao n'int ket ker ; ne vefont ket piz warne, en pad ma vont o vernia arc'hant diwar hon c'housk, rak breman eno hepken eman o micher.

Leret d'in petra 'ra hon deputeed, evit gonit ar 15.000 lur a ya bep bla en o godel ? C'houec'h vla so emaint o klask an tu da nozont ouzimp ; kreski ar fonksionerien... stlabea arc'hant, setu o labour. Hirie n'heller ken bale ; hualet omp eus arók, hag eus a-dren ! N'heller ken bale, hep ma teuler da c'houlec diganañ : « Petore hano ho peus-hu ? Eus a belec'h e tenet ?... Petra 'zo ganañ ? » Mes skolaerien ha skolaerezed a vale a vandenno !

Argaset eo bet ar re a re skol evit netra, hag ar parouziou o devoa diagent daou pe dri mestr-skol da baean, o deus breman c'houec'h ! N'eo ket hep digare ec'h a an truaioù war greski ; pa c'h eo kresket ar mistri-skol, e oa red mat sevel d'e tier nevez ; ha kstel a zo graet d'e !

En distera eus hon farouziou e weler hirie eun ti kaer, a dri estaj, ha pa c'houlenner : « Piou a zo aze o chom ? » e ve respoutet : « Ar skolaer ! » Sevel a ra droug en hon c'halon a gristen, pa welomp, e kichen an tier-ze, hon ilizo... breman tra ar gouarnamant, hag an eus, al laer 'zo anean, poan o tgeri e zonn evit paea ar men a dle harz an iliz da goueza war ar zent ! Eur vez eo !

Eupad ma 'man, marteze, ar bevien o c'houzanv naon ha dienez en eul lochen bennak, e keit-se, en distera eus ar parouziou, evit c'houec'h pe eun dousen vugale, e saver kstel. Laret d'in hag-en ne vefe ket eun tam gwelloc'h implia eul loden eus an arc'hant-ze da wellat doare an dud a boan, da skanvat an truaio !

Goude kement-se, bean 'zo c'hoaz tud, hag a gavo an tu da laret : « Nan, biskoaz n'eo oet ken evurus al labourer evel an de a hirie » d'ar re-ze e laran : « Ma 'n em gavet evurus, bevet ha chomet evurus ! Ma 'n em blijet dall, chomet dall ! »

Ar pez a laka an den an eus eun tam gwiegez bennak, evurus, n'eo ket hepken, e gezeg, e zaoud, e zenvel, pe e voc'h, rak kredi a ran penôs n'eo laket hini ac'hanomp aman evit sevel moc'h, mes ar zonz an eus pep-hini ac'hanomp eun tam peurz bennak en gouarnamant ar vro, ha lakat da dalvezout e nerz gant hini ar re-all, evit hadsevel ar vro-ze eus ar fank, setu eno ar pez a lak hirie evurus kalon an den.

E. AN HENORET.

Perret hag he foudad laez

Perret a sonjas eun devez
Mont en ker da varc'had al laez ;
Dindan ar poud 'oa var he fan
E lakas eun tammig torchen.
Kemer evez, eme houman,
'Barz en pep tra eo ar gwellan.
Kempernet skany eur roben ver,
Hag en he zreid eur botou ler,
Perret plen a ouie kerzet,
Evel ne oa ket a verc'het ;
Dishual mat e oa ive,
Hag en he spered a sonje :

KAERDER MA BRO DREGER

War dòn : Er Finister ec'h on ganet berraet

Me a zo ganet en Bro-Dreger,
A damdost da gerig Gwengam,
Elec'h ma c'h on breman labourer,
Vel gwechall ma zad ha ma mamm;
Ha kent 'vit kwitat,
Ma broig ken vat,
Dianken me a varfe,
Eun Bro. a levane.

Nan eus neb lec'h eur Vro ken seder,
Na ken kosut ive war ar bed,
Evel ma eo ma Bro-Dreger,
Goloet a barkajou ed,
Hag a veurjeou,
Karget avalou,
Eus pere ten ar jistr mad,
A entan ar Breizad.

Eu em Bro e komzer Brezoneg,
Kaeran yez a zo er bed holl;
Dilezet eo ganimp ar galleg,
Gant e zoniou lous ha diroll,
Pere n'int ket gret,
'Vit ar Vretoned,
O deus ar c'haeran zonio
Gret gant barzed o Bro.

Eu em Bro eman c'hoaz ar fe goz,
O devoa gwechall hon zad;
Nan e ket ankouaet, em farroz,
Daoulinan dirak Sent ar Vro,
Pere, hep kat doan,
'Deus kemeret poan
D'ober eus ma Bro garet,
Kaeran hini 'zo er bed.

N'eus ket eur Vro ken karantezus,
Evel ma eo ma hini,
Du-man an holl a zo evurus,
Rak nan eus ket a gasoni.
Holl en em glever,
En hon Bro-Dreger;
E gwir e lec'h ma ren ar fe
'Zo ive karante.

P'arruo an Ankou didrue,
Gant e falc'h lemm, ewar ma zro,
Da lemmel diganin ma bue,
D'am lakât 'touse ar re varo,
Me yei d'ar bed-all
Laouen 'n eur sonjal
E chomo ma c'horf dister
En em Broig Dreger.

Pa vin beziet entouez ma zadou,
En beredig koant ma faroz,
E klevin neuze c'hoaz a wechou
Hekleo ar zoniou gwechall goz
Pere 'mto kanet,
'Keit 'vin war ar bed,
Hag 'rei plijadur d'in-me
Adklevet c'hoaz neuze.

Loeiz VORIS (Penn Dero).

AR MEVEL LAER

c'hoariet farsus etre daou zen : ar mestr hag ar mevel

Ar pez-ma, hervez a gredan, a zo bet lakeat e brezoneg gant ar Breur kezuziet Constantius, Doue r'e bardouno! Kaer eo, evel kement tra a deus eus e bluen ouiziek. Ar fentigel a roan hirio d'ar bobl a Vreiz a zo bet displeget kouls lavaret en holl skoliou kristen eus a Vreiz vrezonek. E pep leac'h e c'houlenned anezi, hag eo bet skrivet hag adskrivet n'ousped gwech. Chomet oa dorn-skridd betek-hen, ha meur a hini a c'houlenne pell a zo e vije moulet. Evit plijadur d'ezo eo ec'h adskrivan ama Ar Mevel laer. Dre chanz eo ez on deuet a-benn da lakaat an dourn warnezi.


KLAODA (Pluenzür).

YANN

(a deu war al leuren o c'hoarzin hag a frota e zaouarn).

A! a! a! a! a! Brr! Brrr! Sell 'ta! sell 'ta!
sell 'ta!

(Hag e kan) :



AR MESTR

Del!... (Hag e ro d'ezan eur javedad). Setu aze, ginou tarte, evit beza dihunet ac'hanon e-kreiz va c'houk. Youc'h'al ha blejal a rez evel eur vioc'h pa goll e leue bilhan. Daoust ha c'hoant ac'h eus e kasfen ac'hanot da glask brennig da Venez-Are? Ankounac'haat a rez penaos ec'h eus eur plas eus ar gwella em zi? Mes taol evez mat! Evit e viet, eo red d'it beza fur, honest ha de-reat... Gwelomp, petra a vank d'it?... Koumanant vat a roann, mechans? Kant lur ar miz!...

YANN

Ya. (Dan dud). Paet e vezan bep tri miz, mes morse gwenneg ebet!...

AR MESTR

Bebet mat out ive...

YANN

Ya. (Dan dud). Er mintin-man, eun tamm tonen gig moc'h, chomet e dilec'h ar c'haz!

AR MESTR

Lojeiz vat ec'h eus ive...

YANN

Ya. (Dan dud). Er c'hrignol, war ar c'holo, hag etouez ar patatez.

AR MESTR

Brao eo an dra-ze, mechans, evit eur paotr yaouank evelout; n'ec'h eus ket c'hoaz ugent vloaz!

YANN

Ya. (Dan dud). Hep kouta an eiz vloaz em boa pa oen dizounet, ha tri miz klevned ouспен.

AR MESTR

Evidon-me ne ket a-walc'h kement-se, rak adalek hizio e fell d'in rei d'it eun dra-all kals gwelloc'h...

YANN

Gwir, aotrou!...

AR MESTR

Va fizianz!...

YANN

Ah! (Dan dud). E fizianz!... Mounez fall, siouaz! rak gant an dra-ze n'hellin biken prena eur bragez neves.

AR MESTR

Gwelet a rez ar podig-man? Bez' ez eus ennan peder fronez, hag a zo fronez dibab, fronez c'houek ha lipous, deuet a bell-bro, da lavaret eo eus enezen ar Madigou! hag a goust daouzek kant lur ar pez!... Ac'hanta! d'it eo... klevet a rez?...

YANN (oc'h asten e zourn).

Oh! Aotrou!...

AR MESTR

D'it eo...

YANN

Oh! Aotrou! Aotrou!...

AR MESTR

D'it eo, e roan anezo evit o c'has da unan eus va gwella mignoned : an aotrou Pendiot, ru Kakouz, niveren trizek. Gwelomp, ha lavar an dra-ze d'in.

YANN

An aotrou Kakouz, ru Pendiot...

AR MESTR

Asa, na pebeuz ginaoueg! An aotrou Pendiot, ru Kakouz, niveren trizek.

YANN

Ya, ya; an aotrou Tribek, ru Kakouz...

AR MESTR

Tribek!... An aotrou Pendiot, a lavaran d'it, niveren trizek, hanvet e gallek numero treize.

YANN

Ah! ya, emañ ganti : Madame Thérèse, ru...

AR MESTR. (a ro d'ezan eur garten).

Doubl sac'h-panez!... Azen gornok ma 'z out! Sell, setu aman chomlec'h va mignon; lenn a ouzout mechanz?

YANN, (o lenn).

Aotrou Pendiot, ru Kakouz, niveren trizek... Alo er c'hiz-se eo e lavaran ive!

AR MESTR

Te a lavaro d'ezan : « Aotrou Pendiot, setu eur podadig fronez eus enezen ar Madigou hag a zigas d'eo'h va Mestr. » Gwelomp, ha lavar freaz an dra-ze.

YANN

Aotrou Madigou, setu aman fronez eus podadig enezen Pendiot, hag a zigas deoc'h va Mestr.

AR MESTR

Me gred, panezen, e rez an azen a-ratoz kaer. Hag e lavar adarre : Aotrou Pendiot, setu eur podadig fronez eus enezen ar Madigou, a zigas deoc'h va Mestr.

YANN

Aotrou Pendiot, setu aman eur podadig fronez eus enezen ar Madigou a zigas d'eo'h va Mestr. Oh! Aotrou, biken n'hellin lavaret mat an dra-ze.

AR MESTR

Deuet eo ganez, klapez ma 'z out!

YANN

Neuze, zotrou, kredit ac'hanon; gwella ma c'hallan e ran.

AR MESTR

Ha dalc'h sonj vat e c'hortozan ac'hanout ama a benn eun heur, evit kaout ar respout. (Mont a ra kwit).

YANN, (e-unan ar podig en e zourn)

Daouzek kant lur pep-hini!... da lavaret eo, an dra-man a dle beza lipous, ha gouest da laouennaat ar galon, evit an memorant eus ho puez. Ha lavaret ez eus tud pinvidik a-walc'h war an douar evit... Ah! va zad kez! perak n'oaste ket eur roue bras? Da vab neuze en divije gallet tanva ar prun eus enezen ar Madigou!

(E keit-se, hag hep ober van, e vizioed o deus diskoulmet an neuden a zalc'he ar paper en dro d'ar taf (stouf).

Sell 'ta, ar golo paper a ya kwit e-unan. Daoust ha ma kemerfen eur bruen?... unan hepken, unan vihan... Ha perak ne gemerfen ket unan? Mignon va Mestr neoar ket ped a zo. Brao eo an dro d'hen ober, ha marize n'her c'havin biken gwelloc'h. Dibradomp anezi dre he bleo, evel a lavar an den Fur. (Kemeret a ra eur brunen dre he lost hag e lonk anezi).

Oh! oh! oh! oh! oh! Baradoz ar baradoz! lammet a rin dreistout! Oh! gwelet a ran gwelet... Aï! aï! aï! (Starda 'ra e zaouarn var e goc hag e ra ardou gwaso'h eget pa vije kroget ar gwent ennan) Aï! aï! aï!... (Deuet eo da veza reiz en eun taol). Ah! emañ ganti; he-unan eman-hi, enoui a ra. La! la! peoc'h, keazig; eur gamaladez a fell deoc'h? mat, bez' ho pezo. (Lonka ra eun eil brunen). Oh! delicious super delectissime... Aï! aï! aï!... Allaz! allaz! setu hi oc'h en gana a daoliou dourn... Aï! aï! aï! aï! aï! aï! aï! gwaso'h-gwaz ez a ganto... (O tont da veza reiz adarre). Gortozit, gortozit eur pennadig, ha kasomp buhan eun drede evit o dispartia. (An hevelep ardou). Aï! aï! aï! Allaz! setu ma en em gannont breman diou ouz unan. Aï! aï! aï! va c'hovig paour... (O reisaat). Siouaz, na jom ganen nemet eun dra da ober : lakaat anezo diou ha diou. (Lonka ra ar brunen sieza hag e chom bamet da zellet). Daouzek kant lur!... Ya, daouzek kant lur a dalvezent!!! Hag ar berad chipolata-man. (Eva ra ar pez a jom). O burzud ar burzudout! pebeuz lipadent! Oh! delicious! delicious! (Hag e kan) :

Pa bakan eul lipaden
Chigoden, chigoden,
Pa bakan eul lipaden,
Va fenn a vez laouen.

(Klevet a ra e vestr hag e laka buhan ar vou-tailh en e c'hodel).

AR MESTR. (gwelet en deus ar c'hoari).

Ah! ah!... emañ dizro?

YANN

Ya, aotrou.

AR MESTR

N'out ket bet pell oc'h ober da dro. (Kregi a ra e breac'h ar paotr hag ec'h hej anezi kenan, dre deir gwech). Mat eo, va fuotr, mat eo, mat eo!

YANN, (d'an dud).

Petra a c'hoari gantan ?

AR MESTR

Trugarekaat a ran ac'hanout, va faotr, trugarekaat, trugarekaat, trugarekaat! (Heja ra muioc'h c'hoaz e vreae'h o lavaret ar c'homzou-ze).

YANN

Mes, aotrou, n'eo ket red va zrugarekaat ken start. Terri a reot va breac'h. (D'an dud). Petra a c'hoari gantan ?

AR MESTR

Nan, va faotr, mes an hini en deus eur mevel mat eveldont (Heja ra bep tro) a zalc'h mat d'ezan. Hag e talc'han, e talc'han, e talc'han! (Heja ra teir gwech).

YANN, (o chacha e vreae'h).

(D'an dud). Re start e talc'h, zoken. Petra a c'hoari gantan ?

AR MESTR

Breman, p'am eus trugarekaat ac'hanout, evel m'oa dleet, kemeromp eur gador. (Heja ra e vevel). Azezomp (Heja ra adarre) ha komzomp eur pennadig. (Heja).

YANN, (o kas e gador ar pella ma c'hell).

(D'an dud). E gwirionez, eun dra bennak a zo.

AR MESTR

Evel-se, va faotr, ec'h eus kavet an hent da vont da di va mignon ?

YANN

Oh ! ya, Aotrou.

AR MESTR

Petra en deus lavaret va mignon d'it ?

YANN

Oh ! lavaret en deus d'in traou, traou, kals traou... eur maread traou, Aotrou.

AR MESTR

Mat eo... Ha peira ec'h eus-te gwelet war ar siminal ?

YANN

War ar siminal, Aotrou?... Oh ! aotrou, pebeuz siminal ! Da genta, bez' ez oa war ar siminal... ya, bez' ez oa... hag ouспен c'hoaz... Ah ! pebeuz siminal goant, Aotrou. Oh ! kaera siminal ! En eur ger, ar c'haera siminal a ouffed da welet !

(Da heuilh). KLAODA.

KENAVO D'HON FERSON KOZ

Mikeliz, war ho tal me 'wel liou an enkreuz ;
Ho kalon 'zo beuet 'barz an dristidigez !
Mikeliz, war ho tal me 'wel liou an enkreuz.

— Kimiadi diouzoc'h, pastor meurber karet,
A ra d'imp kalonad, an eus hon glac'haret !
Kimiadi diouzoc'h, pastor meurber karet.

Enor ha meulodi a zisplij d'ac'h meurber,
Mes me vag ar greden hoc'h eus o meritet.
Enor ha meulodi, a zisplij d'ac'h meurber.

Ha 'nez bout tud dic'hrad, hoc'h ankouat n'hellomp
[ket ;
Ho kwellan blavezion ganimp 'peus tremenet.
Ha 'nez bout tud dic'hrad, hoc'h ankouat n'hellomp
[ket.

Bolonte vat nerzus 'c'h eus laket d'hon c'helen ;
Ganac'h, er rouden vat, e kerzemp 'n eur vanden.
Bolonte vat nerzus 'c'h eus laket d'hon c'helen.

Ho mouez hoc'h eus savet da frikan an techou.
Koulz ha d'hon c'heuerzi en hent ar vertuou !
Ho mouez hoc'h eus zavet da frikan an techou.

Pa yude an dud fall, 'vel bleidi kounnaret,
Kerkent, pastor fidel, 'tastumec'h ho teued,
Pa yude an dud fall, 'vel bleidi kounnaret.

Madeleuz d'ar paour, d'ar c'hlanvour gwelloc'h
[c'hoaz,
An oll o doa 'vidoc'h doujanz ha respet vras !
Madeleuz d'ar paour, d'ar c'hlanvour gwelloc'h
[c'hoaz.

'N ho kimiad e larec'h : « Sonj ouzoc'h oll am o,
« O ! n'am ankouaet ket ebarz ho pedenno !
« 'N ho kimiad e larec'h : « Sonj ouzoc'h oll am o.
« Dalec'h mat da viken da heuilh ma aliou :
« War eun kerzet arok war gwir hent an Euvou ! »
Dalec'h mat da viken da heuilh ma aliou.

— Pastor koz, bet asur hon spered 'vo ganac'h,
An avel hen dougo da iliz koant Plourac'h,
Pastor koz, bet asur, hon spered 'vo ganac'h.

O ! ni a 'n em gavo en baradoz Doue !
O pebez eusted !... unanet adarre !
O ! ni a 'n em gavo en baradoz Doue !

Disul kentan, an 3^a viz mae, e oa en Lokmi-
Gronvel digemeridigez an aotrou Desbois, per-
son neve. Digouet e oa en Lokmikel aboue al
lan d'abarde wardro peder eur.

Netra dudiusoc'h ne wellis em bue evit ne oa
gwelet ar bandennou tud diredet betek Rostren
da zigemer o ferson neve ; bean 'oa kirri ha kezeg
a vern, testeni anat eo karet ar veleien en Lok-
mikel.

Pen Breton.

KLEMMO HON ZALVER JEZUZ-KRIST

(Evit an amzer-Bask)

Ken zod oun bet gant an dud, ma oun chomet gantet
Mes nebut ane, siouaz, 'anve ma c'harante !
Ebarz an Arbel zantel, 'vit an dud, koulskoude,
Dindan ar spes a vara, e choman noz ha de.

Nag a gristen a hallje rei d'in 'r pez a c'houllan,
Eur galon dinam ha tom elec'h en em blijan :
N'e ket evit chom dalc'had etra bevar men yen,
Ec'h on 'barz ar Zakramant roet d'ar Gristenien !

Ine prenet gant ma gwad, ine ken talvoudus,
Ine krouet 'vit an nenv, vit bean evurus,
Penos arruout eno, ma 'deuet ket da gat
An Hini a zo Bue, Gwirione ha Hent mat ?

An Hini ho pezo c'hoant, 'rök kwitat an douar,
Da gat, pa welfet o tout ar maro ken digar,
An Hini vo ho parner hag a zo er bed-man
Ho Tad, ho Preur, hag ive ho Mignon ar gwellan.

C'houi, dreist-holl, ho peus kollet kerent oac'h
[sod gante,

A zo ganin evurus en o eternite,
N'ankouaet ket e c'hallan, vidoc'h... burzud dispar !
Bean ganac'h ha gante en nenv hag en douar.

— O Jezuz, trugare d'ec'h, chileo a rin ho mouez ;
Aliesoc'h me deuto d'ho kat, a-c'houdevez,
Rak c'houi hepken, o ma Mestr, 'hall magan ma
[c'halon,
Derc'hel enni karante peurbadus ha gwirion.

Ganac'h me a vo krenvoc'h evit stourm ouz ar bed,
Ganac'h 'kavin levenez, ganac'h 'm o doan ebéd,
Ha pa vo gant ar maro sklaset ma muzello,
E latin c'hoaz, o vervel, ma Jezuz, ho hano.

Y.-M. G.

AR VOTADEGOU

Dirak ar « méri ».

TREVEREC. — Hanvet : 8 mat ; 2 fall.
FAOUCET. — Hanvet : 9 mat. A chom da han-
van : 3.

BEAR. — Holl fall.
BOURBRIAC. — Holl mat. An otro Mahe, hag
a zavas ar foarion a dap 780 mouez, hag a dre-
men an eil, 8 mouez d'eau nebutoc'h 'vit ar
mér, ha 61 muioc'h 'vit an drede.

GWENGAMP. — Hanvet ; 2 mat ; 17 fall. A
chom da hanvan : 4.

PABU. — Hanvet : 7 mat ; 5 fall.
SANT-AGATHON. — Hanvet : 3 mat ; 3 fall.
A chom da hanvan : 6.

PLOUISY. — Hanvet : 11 fall. A chom da han-
van : 5.

PLOUAGOR. — Hanvet : 3 mat ; 8 fall. A chom
da hanvan : 5.

PLUSQUELLEC. — Holl fall.
SANT-NIGOUDEM. — Hanvet : 4 mat ; 4 fall.
A chom da hanvan : 4.

SANT-SERVEZ. — Holl fall.
CORLAY. — Holl fall.

Kantou Beac'h a zo fall a-bez, nemet Loc-
Euevel.

PRAT. — Holl mat.
PLOUNEVEZ-MOEDEC. — 10 fall ha 3 vat. A
chom da hanvan : 8.

PEMPOUL. — 12 fall ; 4 mat. A chom da han-
van : 5.

PLIJD. — Holl mat.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

COADOUT. — Ar vot. — Al listen vat a dre-
men, Bean 'oa 133 voter.

Beskont Roskoat, 116 ; Louis Michel, 105 ; Yves
Le Bail, 115 ; Vincent Peuron, 109 ; Jules Ma-
gourou, 110 ; Yves Guillou, 106 ; François Bour-
donnec, 96 ; Jean Corson, 101 ; Hippolyte Gautier,
107 ; Joseph Le Moal, 120 ; Jean-Marie Le Lann,
91 ; François Perrot, 103.

PLEUMEUR-BODOU. — Ar vot. — Listen
an otro Champagny a dremen ; an hini diwean a
dap 49 mouez muioc'h 'vit ar c'hentan eus al listen
fall.

PRAT. — Ar vot. — Al listen vat a dremen :
Anthoine, 290 ; Breton, 206 ; Bourdonnec, 232 ;
Buzulier, 264 ; Cavan, 276 ; Coadout, 326 ; Colvez,
328 ; Dromaguet, 224 ; Le Huéron, 237 ; Kerain,
276 ; Martin, 326 ; Meudal, 296 ; Nicolas, 206 ;
Riou, 320 ; Rolland, 275 ; Ropars, 195.

SANT-AGATHON. — Gouel brezonek. —
Gouel Sant-Agathon, elec'h bean ar 17, a zo kaset
d'an 18 a viz mae, en askont d'ar pardon.

SANT-BRIEG. — Retret vrezonek. — Eun
dudi eo gwelet penos emeur stag e kerioù bras, e
lec'h ez eus Bretoned, da zevel evite retrejou ha
gouelioù brezonek. En Oriant, en Anje, en Haer-
Neve, e Pariz zoken, ez eus bet pe retrejou, pe
prezegennou, pe c'hoaz peziou-c'hoari ha kanaouen-
non e yez ar Vro. Sant-Brieg n'halle ket chom
war-lerc'h hag a drugare da aotrou person an
iliz-veur, an aotrou chaloni Barre, ez eo bet ad-
savet hevlene ar retreat vrezonek a oa bet dilezet
epal meur a vloavez. Ar prezezer e oa an tad
Fericot, eus an tadou Maristed, anavezet mad en
hon parouizion a Vreiz-Izel. E gouzou simpl, aes
ha freaz, hag int uhel koulskoude ha lenn a des-
kadurez kristen, a zo aet dom er sperejou hag e
savo puilh diwarns, moarvad, frouez a santeli-
digez. Eur frealidigez eo, e gwirione, evit Brei-
ziz harluet, klevet prezegennou e brezonek hag
ive kantikou ar Vro.

E skoaz hou c'hantikou brezonek, e santer o
veva enne spered hon Bro war eun dro gant san-
telez hou sent koz o deus o savet, na treut na
teusk eo ar c'hantikou gallek n'eus enne nag ene,
na ton, na pedenn !

Niverus e oa diredet Breiziz Sant-Brieg da
chapel Sant-Gwilherm ouz galvaden an aotrou
chaloni Barre ha aboue an da kenta bete fin ar
retret ne rejout nemet kreski, o tiskouez, dre o
gred hag o aket ouz an oferennou hag ar preze-
gennou, nag a c'hoant o devoa holl da glevet komz
Doue e yez ar Vro, nag a vad a rae d'e ar retdre-
ze.

En eur gimidi an aotrou chaloni Barre en
deus lavaret e vije dalc'het hiziviken gant an hent
ken mad en deus addigret hag hon dije an eurvad
da gaout c'hoaz retrejou brezonek e Sant-Gwil-
herm.

Trugare d'ezan, a greiz kalon, hag ive d'an tad
Fericot ha d'an holl veleien o deus laket o foan
evidomp !

GOULENNIT

E' Ti-Moulez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, ball Charmer, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotrou abad	
BULEN, gouenn karton ha skeu- dennoù (gant ar trojou-kas).....	4 real.
Prezegez war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gweneg. 3 gweneg.
Hent ar Groaz.....	3
Bue sant Anton a Badou.....	2
Pedennouigoù ha kelennadurez d'ar vugale.....	1
Merzerenti an Tad Perbar.....	1
Bue an Tad Perbar.....	1
Al leaz.....	1
Meulodi al labourer.....	1
Gwerz sant Mitio.....	1
Gwerz sant Koneri (skeudennet).....	1
An dtaou-paotr.....	1
An Island, Kentoc'h mervet. Eden ar vartoloded, Gwerz sant Kemo, hag all.....	1

Eun diskenn wer ar priz evit meur a hidi.

Gant arc'hant ma laez, me 'breno
Eun diou pe der dousen no.
Ha, ma ve ker tre-ar c'hoaven,
Me 'breno, maruze, oupen.
M'o lako, goude, da c'horri,
'Barz al loj bihan, 'tal an ti.
Ma teu da vat ar c'hoiraden,
Me c'halle kavout eur vanden
Polizi bihan, kigi bras,
Evel n'am eus ket gwelet c'hoaz.
Klud ar yer a vezo kreskat
Gant ma fried, diouz a vo ret.
Al louarn a rey meur a dro ;
Mes, me 'gred ganin a lezo
Peadra 'vit gallout prenan
Eur por'hellig krenn da vevan.
Hennez, m'oar fat, dre ma kresko,
Pouneroc'h, a dra zur, a vo.
Ha gant ar briz a zo warne,
Me 'mo eur vloc'h hag he loe.
Eun dudi e vo o gwelet
War an dachen c'halas o lampet...
— Perret, sionaz, 'lampas ive,
Ha setu fotet ar mare.
N'an eus ket ezom da laret,
Ar poud en pri a oa torret.
Kenavo d'an holl varc'hajo !
Elec'h ar gonid, koll a zo.
'N eur ober eur zell tuezus,
E kwita eul lec'h ken pounius.
Gant aon da vean gourdrouzet,
Hi ya da gontan d'he fried
An dra 'zo arruet ganti ;
Mes herman deu d'he c'honsoli.
— « Ne gemer ket a boan spered,
'Wit da laez da vean fotet,
Galvomp kement-se, mar kerez,
Bourd dic'hounit ar poudad laez. »
Piou n'an eus ket e Breiz-Izel,
En e spered savet kestel ?
Ped-all 'm eus ket bet gwelet c'hoaz,
'Lec'h ober mil, o deus gret kaz ?
Setu aze Petra c'hoarve
Gant an neb a sonj ober re.
Mont goustadik ha dre voder
Eo ali eur c'hoz labourer.

Y.-M. S.

AR YEODET

Ton : *An ti soul pe : Combien j'ai douce souvenance.*
(D'an otro ha d'an itron Aurégan, Pleulec'h).

Yeodet karet, lec'hig dadius,
Elec'h ma tremenas, evurus,
Ma bugaleaj ker meurbed,
Re founous...
Te a vevo en em spered,
Bepred !

N'ankounin biken, nan birviken,
Da lano ha c'houez vat o bleun melen,
Da reier, da wenojeno,
Da draezen,
Ar mor a glec'h da zouaro
Tro-dro...

Penaos e oe savet Kalvar kaer Plougastell

(Tred e pennad).

*Beomp trugarezus e-keuer
ar bevin : ar gwanter a
c'halla just an otro Doue,
riet en deus e c'her e tal'ho
sonj vat eus eur savennad
zour riet en e bano.*

En dervez-se, goude meren, ez eas eur bagad
bugale da gas bokedou d'ar c'havar ha da c'houl-
len digant Doue plijout gantan rei e vennoz da
veach an demezel ker. Spontet meurbed e oent
pa weljout eun den astennet evel eur c'horf maro
war bazennou ar groaz. Edont o vont kwit d'an
daoullenn pa gredas Perig beza gwelet anezan o
finval. Ar vugale a zispontas hag a dostaas.
Evel en doa lavaret Perig, an divroad n'oa ket
maro, skwiz eo ez oa gant an hent en devoa gret.
— « E pe leac'h emañ, bugaligo ? » a c'houl-
lennas-hen gant ar baotred.
— « E Kloc'hars-Karnoët » a lavaras Perig.
— « Mad, mad sur ; n'ou ket troet kalz diwar
va hent neuze, eme ar bechour etre e zent. Hogen,
emezan o koms uhelloc'h, dooust ha n'hellac'h
ket lavaret d'in ha kavout a rafen-me en ho kear
kement hag a vije red d'in da gavout ? »
— « O ya-da ! eme Berig adarre. Ha goude ma

Chapel, Gwerchez... Ha te, kloc'h skintin,
A vrall skav, skav bennoz, hep mintin,
Miz mae, pardon... kan-alc'houeder,
Heol Irliz,
C'houi vag em c'hreiz sonjou tener,
Tener...

Ped gwech a-us d'az aochou, Yeodet,
Azeet war eur garreg kollet,
Ez ou, dinec'h, da hunvreal,
Bet chomet,
C'hoant d'in d'reiz d'ar mor da nijal,
Raktal.

P'eo bet red d'in kwitaat ac'hanout,
En heb Bro me a sonje ennout,
Ma gwellañ mennoz a vije
Evidout...
Te, Yeodet, oa ma c'harante,
Noz, de !

Rak ennout e chome ar gwellañ
Dimeus na redadenou kentan ;
Mignoned, amzer dizoursi,
Pa sonjan !
Plijadur, c'hoarz ha kaniri,
Dudi...

Karout a ren da vartoloded,
Da besketerien, gwir Vretoned,
Pötred dispart dirak ar mör,
Tud kaled,
A ra, dre ar bed, d'an Arvor,
Enor !

Brud da vadelez, war an avel
A zo tec'het pell a Vreiz-Izel ;
Pegwir ez out d'az pugale
Eur c'haval,
Holl e klaskout ennout goude
Eur be.

Ma c'hoant ez eo bezan douaret
En-hañz da chapelig vinniget,
Eno mouez ar mör hirvoudus,
Ar Yeodet,
A vonskano d'in c'hoaz klemmus,
Klemmus...

Da gloc'h a laro d'an tremener :
— « Na dec'h ket hep lezel eur bator... »
Ha neuze eus donder ma be,
Barz dister,
Me gané ma Breiz, ma Doue,
Ha te !

Aug. BOCHER.

DEVEZ AR VOTADEG

— Penôs, otro, ne rofet nemet pemp gwenneg
d'in 'vit dont amañ, ha me kam, da votan evi-
doe'h ? Pemp-all c'hoaz ne ve ket re, rak ma
meren a renkin da gaout en tu bennak !
Hag an « otro » a digas c'hoaz pemp gwenneg
ermez eus e c'hodel.

n'ho pije netra eus a di va zad, e ti-soul an deme-
zel Thereza e vez atao eun dra bennak evit ar
veajourien. »

— « Thereza ! a lavaras an dianavezet war-
lerc'h Perig. « Piou eo eta an demezel-ze ? » a
c'houlennas-hen adarre.

— « Eur vaouez vat, eus ar re wella », a lavaras
ar vugale ar eur vouez.

— « Gwir ? karet a rit eta kalz anezi ? »

— « Ma karomp anezi ? eme Berig, ha piou n'he
c'harfe ket ? Abaoue bloaz 'zo m'ema e Kloc'hars
n'he deus gret nemet vad d'an holl. O na poaniet
omp o welet anezi o vont d'hor c'hwitaat ! »

— « A ! o vont kwit emañ ? »

— « Ya, warc'hoaz vinlin. Evit an dra-ze eo e
teuomp ama da zigas kurunennou, ma plijo gant
Doue ober d'ezhi dizrei dizale en hon touez. »

'Nen doa ket echu ar paotr gant e gomz pa oa
klevet lavaret : « Setu hon demezel o tout ! »
Hag, e gwirionez, edo erru Thereza. Dont a rea,
hi ive, da zaoulina e-hars ar groaz, evel evit la-
varet kenavo d'ezhi ha d'an dud vat o doa gret
d'ezhi eun digemer ker kalonek.

An diavezad en em roas da grenn, evel an
deliou er gwez gant eur sourrad avel, kerent ha
ma welas an demezel... « Ha posubl e ve ? »
emezan.

Eun tam pelloc'h unan hanter-veo a denn eur
« grayen » eus e c'hodel hag a zispleg e vilhed
evit raskan ar re n'int ket eus e vignoned.

O tigouevout eun all :

— Chom ! chom ! emean, lez ar bilhed-se evel
m'eman !

— Nan ! Daou a zo aze ha n'efont ket ebarz !

— Klev 'ta, diskoue da grayen ; pegement e
werzfas anei d'in ?

— Pevar real !

— Beañ fo dek gwenneg !

— Diskoue 'ta da arc'hant !

Setu prenet e grayen gant ar pôtr hag et e vilhed
ebarz gwerc'h mat.

Er bureo, setu eur pikol lanchore meo evel eur
zoner o tout gant e baper 'n e zoru. Mes pa 'man
e vilhed o vont en dorn pôtr ar vouest, e teu
keun d'ean ; marfad, e tremen dirak e zaoulagad ar
bannac'hon a hallje c'hoaz da lonkan hag a chomo
rak e dré, hag a yei en kof eun all. N'e ket nemet
diou eur ; ter eur vat a horolaj a zo c'hoaz da
evan ; ter eur c'hoaz 'rök ma tiskenna da guz heol
bidniget an devez evurus-man.

P'an evo votet, 'nevo ken digant den nag eur
zell nag eur banne... Lakat a ra e baper 'n e
c'hodel, ha kaer 'n eus daou gamarad, krog unan
en pep brech d'ean, komz brao ha d'erc'hel start,
kaer o deus lavaret : « Hast buhan rei da vilhed,
mac'h efomp da gemer bep a vanne » a-walc'h a
spered an eus c'hoaz ar mevier da c'houzout, p'an
nevo votet, vo achu reuz ar bannac'hon. Stourm
a ra eta evel eun ijen o vont d'an horz. Mes unan
eus ar re a zo wardro d'ean a furch e c'hodel hag
a gav ar paper. Aiou ! kerent, eman et er vouest :
« Mil malloz !... » eme ar mevier ; c'hoant
a-walc'h an ije da onetan, o sonjal penôs, 'n eus
lonket goug ar vouest-ze d'ean maruze oupen
eur voutailhad gwin-ardant.

Mes an a daou gonsort a jach anean d'o heuilh :
Ha breman, Yan, eme, k'ez d'ar g'ec da gousket !

Kement-man n'eo ket nemer a dra da rei da
danva pebez gwalen eo deut ar votadeg da vean
en hon bro. Etre arc'hant dismantret ha tud han-
ter-rivnet, foulet, kasoni zavet, traitourach gret,
nag a istor a vije gallet da gontan hag a lakje ho
kalouou mantret !

N'e ket souezus ma eo bet falloc'h 'vit gwelloc'h,
betek hen, ar votadeg en hon bro, pa ve gret
evelse diwar evaj, an eil kas tapout egile, unan
kas gwerzan ker, eun all kas prenan marc'hadmat.

Mes penôs e haller lakat ken nebut a boan hag
a evez d'ober eun dra ken talvoudus hag ar vot ?

Klask a refomp hen displegan aman ar zan-all,
diwar ar pezh hon deus gwelet ha klevet.

Le Gérant : F. GOUETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Thereza ive a jomas a-zav, nec'het bras. Ke-
ment-se, avat, na badas ket pell ; hag ez eas en eul
lamm d'eun em strinka etre divreac'h an hini a
c'h'alvas dioc'hitu : « Va zad ! »

Ya, baron Plougastell eo ez oa, hen e-unan. A
dra zur ar seiz vloaz dienez en doa bet da c'houl-
zanv o doa chechet kals anezan. Hogen, kalon
ar verc'h a zivinas evelato. Ha brema e rede eus
he daoulagad eur mor a zaolou tener, daelou a
lovenez.

Evit gouzout Petra rea d'ar baron beza evel-se
e-unanig oc'h ober hent, deomp gantan da di e
verc'h : eno e klevimp.

Eas eo gwelet pegon souezet e oe ar baron o
kaout e verc'h eat da jom da Gloc'hars ; ma oe
red d'ezhi displega hed-ha-hed ar pezh a yoa di-
gouezet ganti.

Ar baron a yeas e kounnar rus pa glevas pe
seurt taol en doa gret sotrou Lanveog. Ma touas
war an heur e raje d'ezan paea ker. Skoet, tene-
reet e oe e galon, avat, o klevet pe seurt digemer
vat a reas ar c'hontez a Vonfort d'e verc'h.

(Da heuilh).

KLAODA.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANTHOU

16 real ar bloaz evit *Brois* ha *Bro-C'hall*.
2 skoed evit ar broiou estren hag evit *Broio keltiek*.

RENEGEREN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aez

Ar brezonek hag Izel,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Pensez An Gerc.
Gant brezonek zo douar ar feiz.
Gant ar gallekizato a Vreiz.
Pensez An Gerc.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz so ; ma ve trec'het.
Ouspen ar Vez, e ve Pec'hed!
Muz.

AN OTRO SANT ERVOAN Patron Breiz-Izel



E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

PEURACHU EO :

PIPI GONTO

Mirvailhou neve

gant E. AR MOAL (Dra-Na-Dor)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gweneg ar fréjou-kas, da laret eo
• nac gweneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag ien sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivvan reiz ha sklér ar brezoneg.

Lenn amañ, hep dale, eur pennad war al levr neve.

Kef « Breuriez ar Brezoneg »

An otro Savidan, Ploubêr. 10 lur.

N'e ket a-walc'h d'an otro Savidan lakat e boan ; e arc'hant a lak ive da zikour *Breuriez ar Brezoneg*. Bennoz Doue ha trugare d'ean !

Gouelioù « Breuriez ar Brezoneg » en miz Mae

LOMIKEL-AN-TREZ. — An 28 a viz mae, (ha nan a 7 hag an 8. vel ma oa bet merket dre fazi) en em gavo, en Lomikel, gouel *Breuriez ar Brezoneg* evit ar vugale.

Eiz bugel o deus roet o hano betek breman 'vit dont en *Breuriez ar Brezoneg* ha kemer lod el lennadeg :

Yves Clec'h, Emile Bihan, Yves Bonniec, Yves Rideau, Eugénie Ollivier ha Jeanne-Marie Ollivier, Françoise Brozec, Adèle Ruven. Kaset vo ar guzeten d'ar re-man ha d'ar re a roo c'hoaz o hano.

Gant ar gouel e vo c'hoariet :

Paner burzudus ar mevel Fanch ;

Diviz etre al Leonard hag ar C'herneval ;

Diviz etre ar Breton hag ar Poloniad. Kanet vo zoniou ha roet prijou d'ar vugale ha d'an dud yaouank.

Ouspen, eur brezege a vo gret gant an otro Chareton, eus Lanuon.

SANT-AGATHON. — Dilun, 18 a viz mae, e vo en Sant-Agathon gouel *Breuriez ar Brezoneg* evit ar vugale hag ive an dud vras.

Beas vo, war a glevan, en ti Louis Morice, lennadeg vrezoneg ha prijou 'vit ar vugale, prezage vrezonek gant Ar Yeodel, kanoennou, c'hoarizac'h pe tombola, ha, marteze, zoken, eur pezh brezonek. 'Vit ar bôtred vat, beas vo ive jach perchen, men pouez ha butan da c'hounit.

Ho pet sonj !... dilun kentan da diou eur hanter !

N'an eus ket en Breiz n'an eus ket unan,
N'an eus ket eur zant evel sant Ervoan !

An otro sant Ervoan Helouri a oe ganet ar bla 1253, en maner Kervarzin, er Minihy, stok da Landreger. E dad hag e vam, Helouri-Kervarzin hag Azou a Genkiz, eus Peurit, a oa tudjentil a noblaus koz ha brudet mat.

Henkas a rejont da studian da Bariz ha da Orlean. Abred en em lakas d'ober pinijen, hag e tenas da vean war an dro eur burzud a furnez hag a skiant etouez an dud yaouank eus e oad.

O vean et da veleg, sant Ervoan goude bean bet, arôk e velegiaj, barner en Iliz-Veur Roaon, a zizroas da Landreger. Eno e oe adarre roet d'ean gant an Eskob an lievelep karg, hag ouспен e oe hanvet person en Tradeg Divezatoc'h e oe hanvet en Louannec, tostoc'h da Landreger.

Evel barner hag evel person, sant Ervoan a ziskoueas eur furnez, eun aked, eun nerz-kalon hag eur garante dispar.

Bean e oa difennour ha skoazel an holl dud ezomnek, an iutanvezed hag an emzivadeg. Difenn a reas, ive, war bouez koll e vue, gwiriou iliz Landreger ; mat e oa d'ar beotien, betek dispigu e oll beadra, ha 'n em ziwiskan d'o golo ; truezus e oa e kenver ar becherien, betek prezek seiz gwech ar memes de, o vont evit se eus an eil parouz d'eben, hepred war droad hag alies war yun.

Doue a re evitan eleiz a vuzudou ; biskoaz, aboue amzeriou gentan ar Vro, biskoaz den ken fur, ken gwiziek ha ken zantel na dolas troad war donar Breiz-Izel.

Pa varvas, brevet gant ar boan hag ar binijen,

e oe gret d'ean en Landreger eun interamant hevel ouz ar gouel ar c'haeran. Ar bobl hen saludas Sant, ha Doue a zisklerias e oa gwiriou mouez ar bobl, o viunigan e ve dre eleiz a vuzudou. Ar zul 19 a viz mae 1303 e varvas en Kervarzin ; an 19 a viz mae 1347, da laret eo, pevar bla ha tre-gont hepken goude e varo, an Iliz hen lakas war hec'h oteriou hag hen galvas sant.

Aboue, sant Ervoan a zo bet, dreist an holl zent-all, enoret, karet, meulet gant ar Vretoned evel gwir berlezen Breiz Izel hag ar c'haeran mab bet zavet diwar o gouenn. Hen eo paeron Bro Vreiz, he difennour, he skoazel nerzus.

Tresek d'ean, ar Vretoned a lak hirio o foan da hadsevel o Bro, a dro o zellou gant fians ha karante ; hen a c'hadvont o Advokad hag Advokad Breiz Izel ; hag ar greden o deus penôs, dre c'halloud o sant Ervoan benniget, ar *Fe* hag ar *Brezoneg* a vleunio hep dale ha betek fin ar bed, war an douar an eus pleustret ha labourer.

N'hall ket mervel, ar Vro deus ganet sant Ervoan !

ALL. — E kerz miz mae, eun oferen a vo laret en enor da Sant Ervoan, paeron *Bugale Breiz* ha *Breuriez ar Brezoneg*.

Merket vo an de, en koulz, ma hallo bugale *Breuriez ar Brezoneg* mont an de-se d'an oferen en o farouz.

Ar re ane a yelo da Landreger gant ar pardon, n'ankoufent ket pedi sant Ervoan da viunigan o Bro hag ar *Vreuriez* dister he deus hen kemeret da skoazel.

tigasas gantan zeien ar Werc'hez hag e galon a dride; rak paet e oa dreist muzul evelse eus e holl labourio hag e holl boanio.

Hep mar, en doa bet anezhi digant Robert a Sain-tonj, gwechall eskob e Naoned, breman ar-c'heskob e Jerusalem, ha mignon d'e vrêr.

Kerkent ma oe distro d'e vro, Jafre a lakaas e deusor e Kintin, ebarz chapel e gâstel, gwestlet d'ar Werc'hez Vari.

En amzer-ze a fe nerzus, ar brud a redas hep dale en em gave e Kintin Zeien ar Werc'hez. Ervoan, zant bras Breiz-Izel, 'n eur glevet komz a gement-se, a dritas e galon gant ar c'hoant da redek betek enni. Dastum a reas eur vanden parousianiz, er blavezio diwean eus e vue, epad ma oa person e Louannek, ha mont a reas asamblez gante da 'n em striinka d'an daoulin er chapel vihan a oa miret enni ar zeien vinniget. Ar veachse a demas war benn ar zant hag ar re a oa gant-tan eleiz a c'hraso hag a vennozio.

Done a deurevas binniga dre e c'hraso an enorio roet d'ar zeien, hag ar brud anezi a redas dre-holl e Breiz-Izel. Sant Visant Ferrier, pa brezegas en hon bro, a yeas bete Kintin hag a bedas, evel sant Ervoan, dirak zeien Mari.

Parouz Kintin a anavez ar gwir dalvoudgeuz eus an tensor a oa en he Iliz. An tado a hade e kalon o bugale ar garante evitan, hag an enor e-kenver ar zeien zantel a ie bepred war gresk. Evit he diwall gwelloc'h, e oe goloet gant daou pe dri gwiskamant, ha lakeet en eur voest kaer meurbed. Ar voest a oe lie-unan klozet en eun arc'h, asamblez gant treo zakr ha pinvidigezio-all an Iliz. Eur chaloni en doa ar garg d'o miret, hag a renke bep noz kousket en o c'hichen. Eur beleg a denne ar zeien eus he boest, ken lies gwech ma tene eur wreg dougerez d'he goulen. Zervijerez Mari he lake neuze endro d'ezhi hag a vire anezi epad an oferen laret evit he delivranz. Pa zigouee d'eur wreg e poan bean war var da vervel, alies eur chaloni a zouge ar zeien d'he zi.

Setu perak ar zeien a vije goulenet gant tud a bell bro, hag ar chaloniad a renka alies beaji, evit he c'has da Itrouezed bras betek ar c'horn pellan a Vreiz-Izel.

Done a deurevas ober burzudo kaer evit mirout Zeien e Vamm.

Er bloaz 1590, zoudarded an duk a Verkeur a zeuas da waska Kintin, hag e felle d'e kemer ar ger. Evit gonit, da vihana, ne vije leusket tenn ebet war gleier an Iliz, kaeroc'h d'ar c'houlz-se evit ar re zo breman, ar chaloniad a renkaz rei d'e ar vouest a zouge ar zeien zantel.

E lec'h ar voest arc'hant kemeret gant zoudarded Merkeur, e oe gret eur voest neve, henvel ouz an hini genta, nemet ma oa e koat alaouret. Lakeet e oe, herve ar c'hiz, ebarz eun arc'h viasooc'h, hag eur chaloni a dlee he diwall. An Otro Jakez Rault en doa ar garg-se, er penn kenta a vlavez 1600. Setu an tan a grogas e kreiz an noz, ha Jakez Rault a oe devet e-kreiz an tan. Den n'hellas mirout an disteran tra.

Red oe gortoz pevar de arak ma oe gallet kleuza, ha klask netra war dachen ar gambr, devet. Pa oe gret, oe kavet tammo arc'hant, konevr plomm ha sten teuzet. Boest ar zeien, kement kali hag holl dreo zakr an Iliz a oe zuilhet hag eet da netra.

Ha koulskoude, tri de goude, ar Zeien a oe kavet emesk al ludu ha n'he devoa droug ebet. Dre ar burzud-ze, Done en doa komzet, hag e vouez a zeblante laret :

« Arabad ea kaout an disteran disfianz ; Ya, hep mar, houman eo zeien ar Werc'hez Vari. »

Goude ar burzud-man, an devosion a greskas dre Vreiz a-bez evit ar Zeien zantel, betek ken ne oe kresket an iliz ; neuze, ofer ar Werc'hez a oe laketa a goste hag imaj Mari 'oe darbet d'ezhi bean ive lakeet emeaz.

(Da heuilh).

An disprizans 'zo graet d'ar Groaz en Frans

Ton : *Vexilla regis.*

C'houi, gwir Doue en gwirione,
C'houi a verit hon c'harante,
C'houi war eur groaz 'zo bet marvet,
O klask salvi holl dud ar bed.

Gwechal en Frans, 'barz en pep bro,
D'ac'h, d'ho kroaz 'roer enorio,
O lavaret oll en eur ger :

« Salut d'ac'h Jezuz, hon Zalver ! »

Mes breman kalz a dud en Frans
O deveus ouzoc'h disprizans,
C'hoant o deus lakat ho skenden
Dindan o zreid da viviken.

'Vit venji warnoc'h en hon bro,
'Kaser d'an traon ar c'houencho,
'Kaser tud, maez ar Frans ive,
Ho servije mat noz ha de.

Ouzoc'h hag ouz ho kruisifi,
Tud ar Frans o deus kasoni,
Gante d'an traon eo bet tollet
Eus lec'hioù ma oa enoret.

Tollet ermaez ar c'houanchoù,
Tollet ermaez eus ar skolion,
Tollet ermaez ar lez-varnioù,
Tollet ermaez ar c'hlanvioù.

Na c'houlomp ken, 'ma 'n dud divad,
Nep Krist dirak hon daoulagad,
Mes hepken 'vit ken disprizan,
Hag ober ar brezel d'ezan.

Breman nep soudard na helle,
En nep lec'h, 'kreiz ar brezelio,
War e varv eur beleg kavet,
Na poket d'eur Groaz vinniget.

Mestron Franz 'deus graet eur lezen,
Vo 'n treot sakr d'e da viriken,
Ha ze 'vit venji war ar Christ...
An dra-ze a zo meurbet trist.

'N hoc'h enep, o Krist binniget,
An dud en Frans 'zo 'n em zavet,
C'houi 'zo holl-c'halloudek meurbed,
Laket penec'h en Frans, me ho ped.

Pardonet d'imp hon fec'hejon,
Gret m'ho chervijfemp en pep bro,
Gret ma 'c'h emp, goude hon maro,
Holl d'ho meuli 'barz an oeuvo.

Julien GODEST.

« Geriou keumraek ha brezonek »

At skrivagner, F. Vallée (Abherve) en deus gret, breman 'zo eur pennadig, eul leorig godel evit deskil ar C'heumraeg dre zikour ha skoazel ar Brezonek. Ar c'henta mouladur eus al leorig kaer-ze a zo bet digemeret e pep lec'h, gant laouenedigez, gant an holl Vretoned c'hoanteke da zeski yez kaer Bro-Geumri, par d'hor Brezoneg-ni.

Evit ar re n'o deus ket gallet c'hoaz kaout an eurvad da lenn al leor-ze, an aotrou Vallée, a zo o paouez ober eun eil-mouladur eus e leor hag a vo digemeret adarre, kredi 'ran, gant prez e pep lec'h.

Meulenti al leor-ze n'eman mui d'ober ; an holl e anavez hag a oar pegen talvouded eo daoust d'e briz izel. An aotrou Vallée en deus e zavet evit rei dorn d'ar Vrezonekerien da zeski ar C'heumraeg, eur yez breur d'hor Brezoneg. Kaout a rear ennan a bep seurt geriou. An darn vuia eus ar geriou keumraek a zo henvel pe demihenvel ouz hor geriou brezonek-ni, pe da vihana holl int eas mat da entent dre zikour ar ger brezonek.

Mes n'eo ket tout. Evit rei eun tanva d'eomp eus an doare ma komzer du-hont, e Bro-Geumri, an aotrou Vallée en deus bet ar zonz vat da rei d'eomp ive frazennoù berr e keumraeg gant an droñligez brezonek.

« Geriou keumraek ha brezonek » a zo mat-tre c'hoaz d'ar Vretoned gouzdek evit rei d'ezo da c'hrouout penaos e skriver, e Bro-Geumri, ar geriou, ha rei sklerijen d'ezo war an hent a ran-komp da heuilh anan, e Breiz, evit reizha lior yez war skouer ar C'heumraeg, breur hena ar Brezoneg.

DIRLEM.

Goulennit al levrig e ti-moulervez Kroaz ar Vretoned, 15 gweneg (gant an timjou).

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

BOULVRIAK. — Servij bras. — Dirion e oa en Boulvriak servij bras de-ha-bla mam an otro

Herve, person Plnfur. Bean oa, en tu-hont d'eun niver bras a dud, eun ugent beleg pe ouспен.

GURUNHUEL. — Krouget. — Amédée ar Falc'her, pôtrig 12 vla, an eus 'n em grouget en eur c'hoari. C'hoant an evoa da welet penos en em gavje pa vije ar gorden en e c'houg, mes ar skaoñ an evoa laketa dindan e dreid a rampas hag ar pôtr paour a oe krouget da vat.

Eur eontr d'ean an evoa 'n em grouget ive n'eus ket pell.

GWENGAMP. — Gouel ar skolaerien goz. Gouel ar skolaerien goz a vo gret en kolaj Gwen-gamp an 2 a viz even. An holl skolaerien goz a zo pedet da dont.

LANVILIN. — Pardon. — Disul, 10 a viz mae, e oa pardon Lanviliñ. An oferen bred a oe kanet da dek eur gant an Otro Jourand person Rospez, eur pardoner kaer, mar zo. Gret an eus eur brezegas war vue ar beleg kristen ; penos e ve dishanvalet diouz an dud, ha penos e ve argaset en amzer a ren.

Ar brezegas gaer-ze a zo et down en kalon pep-hini, rak an holl a anavez an otro Jourand evit bean eur gwel brezegas.

Da der eur, e oa ar gousperou, ar prosesion. Ne ve ket gwelket kaeroc'h prosesion er parouziou bras, na zoken-ken kaer.

Baniel bras sant Milin douget gant paotred yaouank ; ar Werc'hez douget gant merc'hed gwisket en gwen, hag he baniel bras memes tra ; rebegeñ sant Milin douget gant pôtrig koz, ha kalz a vugale gant drapoñ, bean 'oa, a dra zur, peadra da laoueat ar galon hag an daoulagad. Kwitaet an eus ar pardon, en eur lavaret kenavo da vla, mar he bolante Done, hag en eur lavaret trugarek d'ar bardonerien, dreist holl da vuzikerien vihan Rospez a oa dent ive da zoz er gousperou.

L. CHARRAN.

TREDREZ. — Gouliou brezonek. — A-hoañ ma eo tremenet en Tredrez ar gouel brezonek roet gant Pôtrig Ploulec'h, hag an evoa dastumet eun tri c'chant bennak a dud da welet c'hoari Alanig al Louarn, an Ter c'had, Dre ar bugel, Ar C'hemenner, setu adarre eun all o vont da veau, roet ar wech-man gant Pôtrig Lomikel. An 19 a viz mae, en eun da ouel sant Ervoan, ar re-man a c'hoario e parz ar presbiter, dindan renañ ar otro Durand, person karet Tredrez, an Anket-c'her ha Keriolet.

Da beder ear e vo staget gant ar c'hoari.

SERVEL. — Pardon. — N'hellan ket tremen hep lavaret eur gir bennak diwarben pardon Servel, rak bean eo eun dever kement-man evidon. Pegent kaer eo ar vro-ze d'an daoulagad ! Enni o deus bevet ma zud koz, enni int bet marvet, en he bered int bet douaret, en disheol hec'h iliz kaer, da c'hortoz devez ar varn diwean. Plijadur 'ra d'in gwelet al lec'hioù dudius-se, ha gant daerou 'n em daoulagad e taoulinan da lavaret eur beden war he ar re a zo bet ken mat evidon hag a zo tremenet pell 'zo.

Gant plijadur eta e tenan d'eur pardon ken kaer evel ma eo hini Servel.

Ar zul, an 10 a viz mae, e oe gret. O vean ma oa brao an amzer, kalz a dud a oa diredet eus ar parouziou tro-dro, dreist holl, eus Lannon. Ben koulz an ofern-bred, da dek eur, an iliz a oa leun-kouch.

Ar pardoner, ha n'am eus ket gallet heñ anaout, an eus gret eur gaer a brezegas. Chilaouet mat eo bet gant Servel, rak bean int tud a zonzans Doue.

Ma oa kalz a dud er bourek aben koulz an ofern, aben koulz ar gousperou e oa eun hanter muoc'h. Da der eur e oa kanet ar gousperou war eun ton kaer ha goude e oe gret ar prosesion, mes ken niverus e oa an dud a oa sellet ken 'n eus poan ar prosesion o vont ermaez. Pegen kaer n'eo ket koulskoude ! Ne vank netra. En tu-hont d'ar ban-nielou bras ha d'ar Werc'hez douget gant tud yaouank e oa ive listri bihan douget gant marloled bihan.

O na dudius e oa pep tra ! Ne ouffed nemet meuli parouz Servel, ha trugarekat ar pardoner ha beleier vat Servel.

L. CHARRAN.

Kroaz ar Vretoned

KOMMANCHOU

16 rest ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù heñvel.

REWERDEN

E. AR MOAL. (Kas da hemañ al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TOSNELLEZ, 27, bali Charner, a zigemer aez

Ar brezonek hag feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FRENZ AN GER.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallokezaio a Vreiz.
FRENZ AN GER.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve troc'hel.
Guspenn ar Yez, e ve Pec'hed d'
MILIN.

DEUT E "PIPI GONTO" EN DRO

Aboue pell amzer n'hon devoa klevet kele ebet eus hon mignon Pipi Gonto koz. Eun darn zoken a grede gante e oa diantket.

A drugare Doue, setu kavet gantan ar re hent hon zier goude eur veaj hir, hag eman o tont da c'houlenn diganimp eur skabel en korn an oaled, eur skudellad souben dom hag eur lec'hig didrous da ziskwizan e izili.

N'ho pet ket a doa! Digoll e rey ac'hanoc'h war an ampl eus an digemer a refet d'ean! Goult awalc'h a ret ne fell ket da Pipi dleont man da zen. Deut zo gantan eleiz a varvailhou, peadra da didui, da dihuedi epad eur blavez penn-da-benn ho tud a-bez, koz ha yaouank, pôtred ha merc'hed.

Da gentan e konto d'ac'h-evel ma oar kontant ar gwall-dro c'hoariet da liuen an Tallek gant ar *C'has du*, kaz an archant.

Ma zo unan bennak eus ho tud pe hoc'h amezeien hag a zo krog da grenan terzien Pariz, pedet anean da zont da glevet Pipi o tisplegan *Beaj Fanch ar Minous*, ha me gred e kavo ar pare war ar prim.

Eur pôtr yaouank beanak a zo en ho ti, 'nichans? ma kar jileo *Kovizion Pierig* e tibabo evit hanter-tiegezh eur labourerez vat, eur plac'h fur, treset wesk a gorf hag a spered, evel Fransoasig. Pa grogo ar c'hoant dimei ennon, am c'hredet, ma karet, e tei da sonj d'in eus aliou ma mignon Pierig.

Pipi, o vean ma tigoue d'ean ober tro Breiz eur wejig an amzer, an eus gwel'et alies an dizurz hadet en hon zouez gant ar walen a gastu a hanver ar politik. Ha dre ma plij d'ean kelen ha c'hoarzin, an eus gret eun diviz fentus — eur pezh a vek, me lar d'ac'h — elec'h ma weler ar paour kezh *Job an ti-all*, goude bean digoret re frank e galon da gomzio flour ha trompluz Mezarvro, dauve depute, ha da flugez Ar Filouter, fouetet gantan e archant, o kaout c'hoaz eur penne digant e wreg hag hec'h amezeged.

Goude c'hoarzin, gouelan; evelse eman ar vue. Daou varvailh glac'harus, diwarbenn ar Frenz hag ar Reuz c'hoarveet en hon bro, a-gleo da c'houec'h ojent vla zo, e tispak Pipi d'imp arôk mont en e dro. Ebarz ar re-zeo eo an eus lakeet Pipi ar muian a galon hag a deneridigez. En *Kloareg Kersaouen* e anvetet eur Breizad evel ma vije ezou kalz en hon amzer. Hirie an de, ar Breizad rik a stourm evit Breiz, nan dre an armo, evel ma read d'ar c'houlzio-ze, rak

N'eus ken a vrezelioù breman, en hon amzer;
Nemet gant ar bluen hag ar gomz ne c'hlazer.

mes dre ar bluen, dre ar gomz, ha, dreist oll, dre skouer vat e vue.

Evel ma welet, Pipi 'n eus tremen peadra da dic'haouan ac'hanoc'h, ma leuvret rei repu d'ean. Evit nao gwenneg warnugent ec'h ei d'ho kât betek ho ket. Eun ali mat : klevet 'ran laret e zo arzu hec'h war Bipi gez; daoubennet e 'vel eur yar e-kerz an est. Ma fell d'ac'h eta gwel'et anean, o vont en ho peze, kaset kele d'ean ha ne chomet ket da dortan. Anez e vansac'h war ar beoz hag ho pefe keun sur awalc'h, keun warlerc'h, siouaz! rak Pipi a zo gwelloc'h latennet evit biskoaz.

KAR E VRO

GOUDE AR VOTADEG

Bezan 'zo c'hoaz kalz a dud hag a c'hortoz eur vadelez bennag dimeus ar votadeg. Sonjal a reont e c'hall ar votadeier rei d'hon Bro puc'h hag evrusted, hag o c'hreden eo e teufomp abenn, dre eno, da drec'hi war lezennou fallakr ha da lakaat tud a galon en penn hon farouziou.

A dra zur, kement-se a dlefe bezan. Herve ar skiant vad, eun den tizet a dlefe goude diarben an droug ha miret ouz an dud fall da wala ar vro.

Mes dle n'eo ket arc'hant!

Piou dre aman n'an eus ket d'en em glemm ouz eur bern lezennou hag urzioù disleal?

Piou n'eo ket bet gwasket, eun nebeud blavezioù 'zo, en e gredennoù, en e vadou ha zoken en ene e vugale?

Ne gredan ket e ve 'barz ar vro dek dre gant a gemant a c'hallfe laret : N'hon deus bet droug abed...

Ha koulskoude, ma Doue, nag a dud tizet, siouaz! na harpont ket dre o mouez kement fallagriez a dremen hirie? Nag a gristen, siouaz! ha na garfe biken gwelet ar Fe o tec'hel, ha na garfe biken gwelet serri ilizou, na gwaska beleien; nag a dadou, ar c'hentan o laret ar pedennou en o zi, ar c'hentan o rei skouer-vad d'o bugale ha d'o amezeien, na roont ket o mouez da wasan enebourien ar Relijion, d'an drailhaerien beleien ha d'ar re a zo da gentan o lemmel digant o bugale skol fur ha kelennadurez kristen!

Koulskoude, mar sonjont eun tam en grevusted ar votadeg, mar pouezfent an dalvoudegez he deus o mouez evit ar vad pe ar fall, hini abed eus an dud-se na votfe evit Fanch-ru nag evit Yan-glaz; voti a rafent hepken evit tud a urz, tud a lealded, tud o defe an hevelep sonj, an hevelep kreden ganté.

A belec'h neuze e teu d'imp ar votadegoù fall? Rak dies daonet eo lakaat er penn e c'hall eun den mont d'an ofern, ober e bask, bezan fur, ha rei e vouez, c'hoaz eur wech, d'enebourien e gredennoù ha d'enebourien an urz vad.

Ze n'hall ket bezan. N'haller ket laret ya ha nan, bezan gwenn ha ru, kig ha pesked...

Red eo bezan eun dra pe unan all!

Ar votadegoù fall a deu da gentan eus dizeblanter an dud, eus o yerien, eus an evaj ha, dreist-holl, eus an *trubarderezh*... Oh! en eur votadeg, ar *bobl a zo treitour!* Alies war zigare nozout ouz eun amezeg, dre warizi ouz eur mignon gwelloc'h gwelet hag uheloc'h evitan, an den a roio e vouez d'e wasan enebour, hep sonjal penôs pouez ar vouez-ze a zo gouest da hada er vro dismantr, trubuilh ha daerou...

Gwaz e ze da neb a fizio re er bobl, abred e vo tapet!

Da gentan, pa oan krog d'ober politik, ma zempladurez a dromple ac'hanou alies, ha me ive a sonje evel an dud-all. Herve ma c'hreden, p'am bije lavaret e re daou ha daou pevar, ne grade ket d'in e c'halle den respont : « Nan, daou ha daou ra pemp! »

Breman, p'anavezant ervad petra eo ar politik ha pegen ezet e ve troet ha distroet kalon an den; pa welan nag a dromplerezh, a fallagriez, a dreitouraj a zo en-touez an dud; pa welan eun dorn o frot d'ac'h ho keñ, egile o sanko ar gontel en ho kalon, ac'hanta d'am zro, ez on deñt da vezan amgredik... Breman e varnan an dud herve o oberou ha nau o lavarioù... Disket am eus,

diwar ma c'houst, eo stankoc'h an enebourien, an enebourien guzet, eget ar vignoned; disket am eus e tleomp kavout nebeud a fizianz er politik ha nebeutoc'h c'hoaz er votadeier...

Mes disket am eus ive n'eo ket dleet fallgaloni war zigare eur votadeg fall... Eur votadeg fall a zo eur bar-avel na lar netra — en hon bro hepred — diwar benn spered ha soujou an dud. Diwar troidigezh fall eur votadeg, n'hon deus ket gwir da laret eo kollet, war zigare da ze, nag al lodenvro, nag ar barouez e pere a zo bet votadeg.

Laret an dra-ze e vefe bezan dianaoudek tre diouz ar stum, an doare a ve goret ar votadeier...

Ne gomzin ket eus promesaou kaer mignoned ar Gouarnamant, eus an arc'hant roet en koz, eus an doan a ve goret da niver ha da niver a dud, mar termont da rei o mouez da hemañ, pe da hennez.

Komz a rin hepken eus an evaj milliget... Oh! ar gwinn-ardant daonet! Paneved d'ezan, parouz abed en Breiz na vije diudan kraban ar vlokar-dad, mevelien lous ar Franmasoned. Ar gwinn-ardant e-unan a zo kiriek d'an droug:

Ne dalve ket hen nac'h, biskoaz, biskoaz urz vad N'an eus gallet sevel diwar labour korfad; Keit ma vo evelse ar gouid a vo treut, Rak dimeus eur sae'h-glaou ne deuiou biken bleud!

Ha me c'houll diganac'h, ma c'henvroiz ker, peseurt madelez a c'hallet gortoz a-beurs eun den hag an eus kollet e skiant? Mes, mouez an den-ze a zo gwerzet d'an diwean bannac'h! N'eo ket ar greden-man, nag ar greden-ze, an hini a bae ar muian a vannac'hon, an hini a dev ar muian korsailien an dud hag a lak ane ar c'hlanvan an de warlerc'h, hennez a drec'ho!

Setu perak ne roan ken d'ar votadeier an dalvoudegez a dlefant kavout. Ar votadeier a deu da vezan eur marc'had lous ha divalo, eun devez binniget gortozet gant kalz evel eun digare d'ober eur c'horfad, eur c'horfad betek disloaka...

Kemeret pep den diwar an dour, komzet d'ezan gant poell ha furnez, an den-ze a zo goneet d'ar vad. Digaset anezan ganac'h d'ar bourk de ar votadeg, goret d'ezan eva eur maread hannac'hou, ar paourkezh den a goll e benn. Da bion e vo neuze e vouez? N'eo ket diec gouzout; war gwriant an droug ne sav nemet droug; mouez an den-ze a vo d'ar gwinn-ardant, d'an dizurz.

Poanius eo kement-man d'anzav:

Ha pa welan gwerza ken buhan eun ene, Lakaat diadan an treid enor, brud-vad ha fe, Ya, pa welan eun tad hep sellet war a lerc'h, Hep sonjal en e wreg, en e vab, en e verc'h, Pa welan anezan o tizezel a-grenn Kentelioù ar furnez war zigare ru, gwenn, E huchan gant kounnar: « Petra rez, o mevier, Gwerza da diegez evit tregont diner? Lemmel dimeus da di ar puc'h, ar garante, Muntra kalon da wreg, ene da vugale! »

Setu koulskoude ar pezh a ve goret...

Ha penos, ma mignoned ker, penos stourm eneb da ze? Rak, keit ma vo gwinn-ardant e vo votadeier fall. Ha, mar glemman ar gwinn-ardant, e klemman anezan kement diouz ta ma mignoned evel diouz tu ma enebourien. Bissan poan eun den a urz eo bezan red d'ezan pae, dre *vanna-c'hou*, eun den-all d'ober e zleaz striz. Mes, allaz, keit ma talc'ho mignoned ar Gouarnamant, hon mignoned-ni a renko ive heuilh ane, petramant n'o devo ket eur vouez hepken.

En gwirione, mantrus ha mezus eo!

N'e welan neuze nemet eul lezen a gemant a

Kroaz ar Vretoned

KOUKANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-Chall.
2 skoed evit ar broion estren hag evit ar Broio keltiek.

RENERDIEN

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMBRANNOU-KONVERZ

An Aotrou TOSKLEIEN, 27, balli Charner, a zigemer aez

Ar brezonek hag feiz,
A zo breur ha c'hoar-en Breiz.
FEMIZ AR GEAZ.
Gant brezonek no dud ar feiz,
Gant ar gallekoro a Vreiz.
FRANZ AR GEAZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspen ar Vez, e ve Pec'het d'
MIZ.

BREURIEZ AR BREZONEG

Gouel bras en Pleumeur-Bodou, da zul ha da lun ar Pantekost, 7 hag 8 a viz Even

D'AR ZUL

1. *Ar mab prodig.* pezh-c'hoari gant gwiskamanchou ispisial, c'hoariet gant Pôtréd Pleuveur.
2. *Kousk, Breiz-Isel,* kanet gant eur strollad merc'hed yaouank.
3. *Soniou brezonek,* gant pôtréd yaouank ar patronaj.
4. *Eun nebeut girioù,* gant Ar Yeodet.
5. *C'hoari-sac'h,* pe tombola, 'vit an holl.

Priz ar plasou : Ar re gentan : 5 kweneg.
Ar re-all : 2 wennek.

D'AL LUN

1. *Ar mab prodig.*
2. *Kousk, Breiz-Isel,* gant ar merc'hed yaouank.
3. *Soniou brezonek,* gant ar hôtréd yaouank.
4. *Prezeg,* gant Ar Yeodet.
5. *Prezeg,* gant an otro markiz Lestourbeillon, depute Gwened, rener *Keoredigez Breiz.*
6. *Kest evit « Breuriez ar Brezoneg. »*
7. *Prijou,* roet d'ar vugale, gant « Breuriez ar Brezoneg. »

*Tud ar barouzh na haefont ket o flasou.
An dud a ziazez a baes 5 kweneg o flas.*

OFEREN "BREURIEZ AR BREZONEG" en enor da zant Ervoan

Dimeurz, 2 a viz even, da 7 eur, e vo laret an oferen laket en enor da zant Ervoan gant *Breuriez ar Brezoneg*, da hed ar zant karantezus da skuilh e vennoz war hon labour ha war ar vugale bedet er Vreuziezh.

Ar vugale a hallo a rei mat mont an de-ze d'an oferen.

— Marie Tilly, eus Carnoet, ha Pierre Ar Bail, eus Kervaria, o deus goneet unan, eur groaz, egile, eur yalc'h en c'hoari-zac'h Sant-Agathon. Kaset voint d'e.

LEVR GRAMMADEG

AN OTRO CLERC

erbedet gant an otro 'n Eskob.

Lennerien *Kroaz ar Vretoned* a gavo aman warlerc'h troidigez eul lizer a veulodi kaset gant an otro 'n Eskob d'an otro Clerc (Kloareg ar Wern) an eus gret ar « *Grammaire bretonne* du breton de Tréguier » 'zo bet kômzou anezi aman hag a zo bet embannet en penn hon c'hazeten.

Ra denio mui-ouz-mui ar Vretoned, dreist holl ar re yaouank, da brenan ha da studian levr an otro Clerc, eur pezh labour hag a doug kement a bouez dirak daoulagad an otro 'n Eskob.

Aotrou Clerc ker,

Bet em eus ho *Grammaire bretonne*. Ho trugarekaat a ran dav ezan he c'hinniget d'in. Kalz a dud a gemeran e kemeret a zell ouz hon yez keltiek koz. Testeniou ma c'harantez n'em eus ket erbedet

d'ezi. Eur mennad a vagan zoken em spered hag a zo galvet da rei d'ezi eul lusk neve mar deu da vad, evel em eus esper. A-walc'h eo evit rei d'ac'h da intent gant pegen bras laouenidigez em eus klevet e oac'h o steui ho *Grammaire bretonne* ha gant pegement a genlevaez he saludan o tont eus ar wasg.

N'oun ket deut doun a-walc'h e studi ar yez vrezonek evit ma kredfen sevel, eus ma ferz mannan, eun ali a bouez diwar-benn ho labour. Hogen ho kouiziegez anat war ar sort poenchoù ha barn veulus ar vrezonekerien vat a zo em c'hichen n'am lezont tam en arvar war e dalvoudegez.

Gant-se ec'h erbedan ar studi anezan da gement hini o deus evelidon — hag i war an divezadou — ar c'hoant meulus da bleustri eus ar gwella kuziadelloù hon yez koz hag ive d'ar re, gwelloc'h menoziet pe gwelloc'h harpet gant an digenezadennoù, a fell d'e gwesta d'ezi amzer dibres eur velegiez o teraoui ha dalc'hidigez eun envor en he flamman nerz, hag ouспен d'an neb, boaz da gomz ar brezoneg, a laka e breder da beurdanva ene ar yez ha begen uhelan he lennegez.

Kredit, aotrou Clerc ker, ez oun a galon ganac'h en Hon Salver.

Jal LORANZ.

Eskob Sant-Brieg ha Treger.

Eur gir warlerc'h ar votadeg

... N'eo ket, a-walc'h, de eur votadeg, evan eun douzen chopivadou gwini-ardant ha goude, pa vo ar penn er zac'h, kemer eun tam paper bennak, ha mont da rei anezan d'ar mer pe d'unan all!

Poanuis eo gwelet, de ar votadeg, hon c'hen-vreudeur, pri ha fank tout, ledet en fouz an heuchou bras.

En de-ze koulskoude, eo e tleje pep-hini ac'hanomp kaout e skiant vat pen-da-ben.

Mar gweltemp pegement a dalvoudegez an neus de ar votadeg evidomp hag evit hon bro, e lez-femp a-goste, enpad eun hanter devez, an evajeier lous, a laka an den da goll e skiant, hag e yec'hed! Eun driez eo gwelet penos en em veo an dud, an de a hruet Tud veo dre oll! Henvel ouz bagadou moc'h! En han Doue, an de-ze, da vitanan, ho pet sonj penos ec'h oc'h eun tammik uhelloc'h eget an aneval!

Evidomp-ni eo e votomp! Mes pa ver meo, e voter ken buhan evit tud fallakr, lamponed evel evit tud a fesou!

Ar Breizad a dle bea hirie hepred war evez, digor frank gantan e zaoulagad. Ne die ket lezel kas ha digas anezan, gant kement hini an eus eun tammig barv melen frizet bennak diudan e fri, war digare ma komsfont eus liberte.

Ar ger-ze a ra kement a vad d'ar galou! Ya, al liberte eo a c'houlennomp. Siouaz! ar gir n'eman nep lec'h, nemet en geno an dud fall-ze ha war ar paper! Liberte? Evit piou? Evit ar veleien hag an dud laeret? Evit ar seurezed a zo breman er broiou estren? Honnez eo o liberte! Liberte boanuis! — Liberte an dauvad pa vez kontel ar c'higer 'n e c'hoag!

Piou hon deus da damall! Piou a zo kaoz da gement-man, ma n'eo ket ni oll? Pa blij d'imp bean moustret, pa blij d'imp gwelet ober eus hon bugale pejo fall, kendelc'homp hepred da votan evel tud zod, hep goulen diganac'h hoc'h-unan: « Petra ran-me! Petra 'm eus me gret? Petra rin-me? »

Petra rei-hu? Biskoaz n'ho peus gouveet pegement a dalvoudegez an eus an tam paper a laket em kamb ar merdi, de ar votadeg? An tam paper-ze a roet, evit eur bannac'h pe daou d'ho priasa ha da wasa enebourien ho pro Breiz!...

E. AN HENORET.

Setu bet breman war *Kroaz ar Vretoned* penadou-skrid eus an Arvor hag an Argoad diwar-ben ar votadeg. Daou gloc'h an Argoad hag an Arvor, o-daou e sonont ar c'hiaz war ar vro, hag e lavaront malloz d'an evaj ha, dreist-holl, d'ar gwini-ardant.

An de-all, e kleven lavaret gant unan bennak hag an evaj mesket ive gant ar vot :

« Klenned an evaj a zo ganimp, Bretoned. An evaj an eus laket e vunum 'n hon gwaziou! » Ma vije gallet ni veri nag a donel gwini-ardant a zo bet evet en Treger hag en Goelo 'kerz ar vot, ni veri nag a arc'hant a zo bet dismantret, ma vije gallet lakat en eun tu an evaj evet hag en tu-all an arc'hant kollet, n'eus den, zoken ar mevier ar c'haletan, ha na sponte!

Koulskoude, bet zo laret kalz a gomzou kaer, skrivet kalz a dreo a skiant diwarben gwall-si an eferien. Betek breman, avad, en Breiz petra 'zo bet gret? Brao eo laret, brao eo skrivan... mes ped a gomzou, ped a skridoù 'zo ezom da harz evan eur banne mijk hepken! Laret ve 'zo ezom, er brezel, e bouez a blom da lazan eun den, mes me gred e vefe ezom seiz gwec'h warnugent e bouez a baper hag a aliou d'ober d'eur mevier tremen, eun devez hepken, hep e daken!

Ma c'hortozar ar c'homzou, ar skridoù hag al lezennou da d'eri si ar vezventi, e vefomp beuet gant ar gwini-ardant arôk m'an nevo kavet skoilh ebet.

Red eo d'imp, ni hon unan, ober eur c'hrog warnan. Aman, evel en pep tra, n'eus nemet lezel ar re goz a-goste, ha pleal war ze gant ar re yaouank, ha, dreist-holl, ar vugale.

Breuriez ar Brezoneg eman he zell war ze, ha keutan bla vo, ec'h esao sevel etonez ar vugale o devo roet d'ei o hanô, eun dra bennak enep d'ar vezventi.

A-hent-all, an dud yaouank o deus kemeret da vicher kelen ar re-all, tec'hel diouz an droug ha rei skouer, forz e pe giz, ar re-ze, keutan tra 'zo dleet d'e ober eo lezel krenn a-goste ar gwini-ardant, da vitanan.

A dra zur, *Kroaz ar Vretoned* ha *Breuriez ar Brezoneg* a dizroo c'hoaz war gement-man, ken o devo gret eun dra bennak...

Re bell 'zo e ver o prezek, re bell 'zo 'ver ive o 'n em c'hortoz hag o laret : Hen-ha-hen eo dleet d'ean rei ar skouer!

Lezomp hen-ha-hen d'ober e henn ha greomp hon hini. Greomp eus hon zam tu gwelikan ma hallfomp, ha goultomp Doue d'hou zikour!

BREURIEZ AR BREZONEG

Gouel Sant-Agathon

Warlerc'h Ploubêr, Sant-Agathon! *Breuriez ar Brezoneg* a dap eus an Arvor d'an Argoad, eus Treger da Welo hag eus Gwelo da Gerne.

En kement lec'h hag a zo ennan Bretoned karantezus e-kenver o Bro hag he Yez, vugale spe-redek, c'hoant d'e da stagan gant an deskamant brezoneg, *Breuriez ar Brezoneg* a ya gant levez-nez da rei zikour ha skoazel.

A dra zur, en Sant-Agathon he deus kavet hag an eil hag egile. Bretoned karantezus ha bugale digor o spered warzu treo o Bro.

An Itron Moris hag he bugale o devoa kemeret war o c'hoat kement a zo ezom evit danzen eur gouel : plect o devoa gant ar vugale ha gret an digemer en o zi.

Pa oa ket evelse pôtréd, *Breuriez ar Brezoneg* a halie kerzet hep doan; sur e oant eus o zol.

Pan arruis eta, dilan ar bene en Kervinou, charreet plen en gvetur ma mignon Loeiz Voris (Pen-Dero) ar vugale, hag a oa war evez, a dostaas ive pep-hini eus e du. Ar beure e oa lakat al lennegeg hag ar prijou d'abarde, asambles gant ar gouel, Sant-Agathon a zo eur barouzh vihan; a hent-all

Mes eur mintin 'keit ha ma oan o pedi
'Barz ar chapel.
Me a glevas war an nor o listoni
Tolio morzel.
An archerien, dre urz meuz o mestro,
A oa ari.
Da laerez d'imp hon c'houlent, hon holl vadou,
D'hon separi (diou wech).

Laket ermez eus ar lec'h am moa choazet
Evit mervel.
Me 'meus redet, gant eur galon glac'haret.
D'ar broio pell.
Tremenet 'm eus dre meur a dristidigez,
Pell eus ma bro.
Renket, zoken, gouzanv an naon aliez.
Skuilhan daero (diou wech).

Mes peñ a ra ar muian reuz d'am c'halon
Ez eo gwelet
Ar stad ken trist eman hon relijion
'N hon bro garet.
Klevet beude an torfejou ken spontus,
A ra dre holl
Enep d'hon fe eun donad tud gwalleürus.
'Zo et da goll (diou wech).

O ma Doue, mar gallfe ma holl boanio
Ho kontanti.
O c'houzanvfen hep skuilh daero na klemmo,
Hep kasoni,
'Vit ma teüo hon bro Franz c'hoaz d'ho karet,
Ha da vean
Ar peñ eo bet, hed an amzer dremenet,
Ho merc'h henan (diou wech).
Yves-Marie PRIGENT,
skolaer kristen Penvenan.

TOG JANI

Setu Jani o'ch arruout er ger eus an oferen-bred,
hag o jachan he boned bihan gwenn tulotet diwar
he fenn, ha da vouzan raktal en korn ar bank
tol.

— « A? evels 'man kont, merc'h vihan, eme he
mam. Ne blij ket ho poned d'ac'h? Ha daoust
petra a divalo an eus ar boned-se? Eur boned hag
a oa bet d'ho c'hoar Mona, (Doue d'he c'hresko
'joa!) bet d'ho prenir Fanchig, 'rök oa et en bra-
gou; eur boned bet gwennet ha feret ken brao
gant ho c'hoar Katel, ha n'houllet ket lakat
anean!

Neuze 'la, c'houi yei diskabel! Me na brenin
ket a dokou, n'et ket da gredi ze d'ac'h!

Pa vo deñt an oad d'ac'h, c'houi yei en kouef,
mes da c'hortoz, c'houi a viro ho poned!

'N han da Doue 'ta, tokou zur! Ha goude vo et
en tog, marteze vo red laret *mami-zell* d'an di-
mezel, ha bean pont ha planken dindani, ha
c'hoaz e vefomp en hec'h rest. Me wel erfad penos
'man kont gant ar merc'hedigou-all dre aze. Lena
Prijant, mar plij, boue eo et en tog, na briz ken
mont d'an oferen asambles gant he mam-goz.

Marvad, ar gampinodenez-ze eo savet he c'halite
d'ei eur meudad, 'boue 'deus eun tog war he fenn
hag eul lost pig warnean!...

Laket ho poned war ho pleo, plac'hig, pe me
lar d'ac'h, mar gallan bean trempet ar skulladou-
man, c'houi ya da gavet zouben zal d'ho meren!

Janni a oa pennek. Peurvuian ar merc'hedigou
eiz, nao bla, a ve pennek. Ne lakas ket he zog, ha
setu e c'hoarvezas petra? E koueas koad an ti
warni, hag e renk as lakat he boned pe tremen
hep he meren.

Hag e-kreiz eur reujad gouelan, e lavare :

— Ya, hag ar re-all a ra gwap ouzin, 'balamour
'm eus eur boned! Dalc'humad e veint o c'hoarzin
ganin!

— C'hoarzet gante ive! eme ar vam. Laret d'in
hag-en 'zo man ebet treset falloch 'vit eun tog
war benn ho kamaradez Lena! Eur vez eo sellet
outi! Foei!

Jani a yeas d'ar c'hatekiz ha d'ar gousperou
gant he boned; mes eur souj a oa et 'n he fenn
'vel eun ibilh, ha, gant ar sonj-ze, e tremenas he
devez penn-da-benn :

— 'Benn disul me 'm o eun tog ive! 'Benn
disul me 'm o eun tog ive!

'Pad ar zun, Jani a houvreas 'barz an tog-se.
Pebez evurusted, mont en tog! Loskat eno boned
Mona ha Fanchig, ar c'hoz tra goz-ze, ha lakat en
e blas, war he bleo melen, eun tog goloet a blu, a
vleun hag a rubanou, o pebez levenez!

Mes eus a belec'h kaout an tog? Mam n'houl
ket klevet komz a dokou; Katel a zo gwennerez,
hag eo gwel gant gwelet keruion an diaoul 'vit
gwelet eun tog... Koulskoude red eo kaout unan
'benn disul, koustet a gousto; Jani he deus laket
se don en he fenn pennek.

(D'achui war « Loden ar Vugale. »)

D...

TOL-ESA WAR BUE SENT BREIZ

Sant Konwoion, abad kouent Redon (800-868)

An abad Konwoion hon c'has
d'ho kavet 'vit ho pedi da
vret d'ean al lec'h an eus
dibabet da bodi Doue evi-
doc'h hag evit Breiz-Izel.
(Komzou Louhemel, diskibl
Konwoion, da Nomenoe).

Epad tri bla goude ma oa bet kurunet, Nomi-
noe a chomas en brezel ouz ar C'hallaoned hag a
dre'has warne e pep krog. Goude an tri bla-ze, e
varvas. An istor na lar ket ma 'n em welas Kon-
woion hag hen etro an amzer-ze; n'e ket da
gredi.

Erispoe, mab Nomenoe, a zalc'has da vrezelli;
ar bla 851, pemp sun goude maro e dad, e roas
eul lamm adarre d'ar C'hallaoned war dachen
Ballon; diwar an de-ze, ar roue gall hen zaludas
Roue Breiz-Izel, hag a lezas gantan an douarou
goneet gant Nomenoe, Bro Roaon ha Bro Naoned.

Konwoion a anaveas neuze Erispoe da vestr;
heman a lezas gant an Abad kement an evoa bet
eus a zorn ar C'hallaoned hag a stagas c'hoaz ouz
ar madou-ze madou neve.

Daoust da ze, blavezion diwean an abad zantel
a oa leun a velkoni hag a dristidigez. Tud goue,
hanvet Normaned, diredet war listri eus broiou
an Hanter-noz, a c'halc'hare oclhou Breiz-Izel, o
laerez, o tana, hag o lazaz dreist-holl wardro da
ger Naoned.

Ar bla 853, eur bagad ane, gant tremen kant
lestr, a dapas hent Roton, dre ster ar Vilen, e
sonj da vont da laerez an abad. Eur barr arne a
zismantas o listri hag a reas d'ho souzan; mes
dleut e rent dizrei, eur wech desket gante an
doare. Eun dra-all a deuas, 'vel eun tol kleze, da
rannan kalon ar zant. Ar roue Erispoe a oe lazat
ar bla 857, gant e genderv, ar prins Salaün. An
torfed a oe seul euzasoc'h ma oe roet tol ar maro
d'ar roue war oter eun iliz elec'h ma oa lec'h et
rak e vourevien.

Daou vla arök e varo, an abad zantel a welas
c'hoaz gwasoc'h; ar Vretaned hag an Normaned
unanet aneb ar C'hallaoned hag o tistrujan eul
loden vras eus ar vro etre Roaon ha Pariz.

Mes pa c'hoarvezas kement-se, Konwoion na oa
ken en Roton. 'Vit tec'hel 'rak an Normaned, 'n
evoa goullet digant Salaün, rei d'ean repu en e
gozni. Ar roue a zigemeras anean en eur palez an
evoa en Plelan, hag a oe hanvet a-c'houde abati
Salaün. Eno ec'h achuas Konwoion, dre an dae-
rou hag ar binijen, e vus ket ken talvoudus evit
Doue ha Breiz-Izel. Laouen e vije bet ganen lavaret e
oe lidet eur gouel bras evit bezian sant Konwoion,
bet keit-all unanet gant Nomenoe evit ober gant
Breiz-Izel eur vro. Mes maro sant Konwoion a
zigoueas e kreiz reuz ar brezelioù enep d'an Nor-
maned, hag ar c'hanvou a reas d'ean e venech'h
hag an dud a iliz a oe mouget gant trouz an em-
gann.

Beziat e oe en kount Plelan. Divezatoc'h, e
relegou oe donget da Roton.

Eno oa c'hoaz miret al loden vras ane er sei-
tekvet kantved, pa deuas dom Lobineau, manac'h
a urz sant Benaet, da skrivan istor e vus.

F'ENTIGELL

Jakez Loupez, o tremen d'an derou-noz a-biou
da di e vignon Pipi Dosten, a wel, dre ar prene-
str, an dram-skeud anezan.

— « Ac'hanta, Pipi, emezan, pe te pe da vreur
a zo aze? »

— « A betra a leus ezom, Jakez, eme Bipi? »

— « Mar deo te a zo aze, prest d'in ugent real,
mar plich. »

— « O neuze, eme Bipi Dosten, n'e ket me a zo
aman, ma breur an hini eo. »

KELEIER EUS AR BED-OLL

Prezidant ar Republik en Bro-Saoz. — An
otro Fallières a zo et da Vro-Zaoz da welet ar roue
Edouard VII. Digemeret mat eo het, Herve, er
pred bras a zo bet kinniget d'ean gant ar roue, an
listri a dalves tremen daou c'hant mit skoad; an
dol a oa sklerrjennet gant eiz kantelour aour, eur
bern goleier war bep-hini ane, ha podou bras, en
aour fin, a oa e-kreiz tre pep kantelour hag i leun
a vokedou roz.
C'houezek seurt meuz a oa da zibri.

Er Maroc. — Bepred ve krogion er Maroc. En
El-Menabba, hon zoudard a oe dihunet gant an
tennon da der eur eus ar beure; an Arabed a oa
warne. Arök ma hallas hon zoudard tapout o
c'hreuv, e oe lazet pe tizet d'e pemp ha tregont a
dud. An Arabed, hag i toulgovet gant toliou beg
baiontez a denne hag a skoe bepred diouz o
gourve.

En gwetur dre dan. — Eur wetur dre dan eus
Pariz a zo o paonez arruout en Moskou, gret
gant talvoudegez 700 leo en peder eur war-
nugent.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOELO-KERNE-UHEL

BERHET. — Aneval spontet. — Gustave Tan-
guy, eus Berhet, a oa o vont en e garr d'ar Roc'h,
pa spontas e aneval ha mont d'en em skei en eur
c'harr-all a oa o vont en e rök. An daou garr a oe
diskaret. A drugare Doue, ne oe den ebet gwall
dizet.

GWENGANP. — Oferen neve. — An otro
'n abad Dereat a lare disul e oferen gentan en
iliz an Itron-Varia-Wir-Zikour, en Gwengamp. An
otro Berthou, aluzenner leanezed Landreger, a
reas eur gaer a brezegen. Hon gourc'hemennou
d'ar beleg yaouank an eus trec'hel war gement
skoilh an eus bet kavet stignet war e hent abeurz
lezennoù fallakr.

LANRODEK. — Dre e gousk. — Cité, eus
Lanrodec, zoudard en Gwengamp, a zavas eun
nosvez e kreiz e gousk hag a goueas eus an estaj
kentan en porz ar c'hazern.

Red eo kas anean d'an hospital.

E GWERZ : Grammaire du
breston de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, keleenner Collège
Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (DIR-NA-DOR)

PRIZ :

5 real; ha 4 gweneg ar frèjou-kas, da laret eo
nao gweneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag 'ben sinet
gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skri-
van reiz ha sklér ar brezoneg.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, bali Charner,
Sant-Briek.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Loeiz Voris a felle d'eau kaout, an tol kentan, nebeutoc'h a zavez, mes hini mat; dre ze, ne oa ket kalz a vugale o lenn, unnek etre pôtred ha merc'hed; mes daoust d'e da vean bet nebeut a skol, bepred ec'h ouzont distagan mat ar brezoneg.

Unan ane zoken, hag a oa bet pemp sun hep kaout e gazetel *Kroaz ar Vretoned*, na oa ket chomet warlerc'h, 'vit kelo ze. Derc'hel re bepred tost d'ar re-all, eur priz a dapas evelte.

N'eo ket ezom, avat, da laret trugare na da bôt al lizerou na d'an otro mesk-skol, rak, ma rojont d'eun zikour, eo war an tu 'tiskrap ar yar o viret outan *Kroaz ar Vretoned*.

Da greiste, mignoned a arruvas eus ar Merzer, hag Ar Yeodet o vean digouezet d'e dro, e oe eun tam abaden joatis da c'hortoz ter eur. Da der eur, an dud, eur c'houec'h ugent bennak, a zo dastu-met er c'harti 'lec'h eman ar gouel da vean. Kalz a bôtred a zo ane. War ar chafod savet en penn ar c'harti eo pignet an otrone Clere ha Guillou, eus kolaj Gwengamp, hag ar Yeodet, ar prezeger a ra. Gant an otro Clere e teu ar pozitou kentan. Rei da anaveout d'an holl pion eo Ar Yeodet. E gomzou madelezus a zo digemeret mat gant an holl hag a zigor ar sperejou da danya prezegen birvidik ar barz. Ar Yeodet a oa bet teodet a-ratoz kaer evit komz a dreo ar Vro. Petra eo ar Vro, petra eo Breiz-Izel, pegement eo dleef he c'harout ha chom stag ouz he c'hiziou koz, a deu gantan ken eo eun dudi.

Warlerc'h komz, kana. Ar Yeodet an eus soniou ken c'houec'h hag e brezegennou hag a oar o c'hana 'vel ma oar prezek. Setu *Chom en Breiz-Izel ha Merc'hed Fanek an Anaon*. En e c'houde, e teu ar C'hlec'h, eur pôt yaouank eus ar Merzer, teodet a zoare, hen ive, hag a gân *Ar pilhaouer*, sôu feutis al Leoniz. Eur plac'hig a deu neuze da ganer eur werz kalonek zavet gant hon mignon, Loeiz Voris.

Eur priz, a dapas ar ganerez, rak mar oa brao ar zôn, kanet ha desket mat e oa ive. Loeiz Voris a c'hoari d'e dro *Mével ar pilhaouer*; eun ibilh, m'hen tou d'ac'h, ar mevel-ze! Ma! disrevelet e oe 'vel oa dleef, ha *Mével ar pilhaouer*, hen e-unan, a zo barek da dennan tud d'e welet.

Setu breman ar c'hoari-zac'h. Biskoaz n'hon doa gwerzet mui a vilhejou; evit gwir, biskoaz n'hon doa kavet kenkouz gwerzerez hag an dimezel Moris hag he mignonezed. An abaden na badkêr pell, mes leun eo a c'hoarz hag a feut. Pa oe diskennet eur yar goz diwar he c'hlud, ha kin-niget d'ar plac'h yaouank he deus he goneet, ne oe den trist ebet.

Penaos e oe savet Kalvar kaer Plougastell

(Trede pennad).

Bezomp trugarezuz e-kenver ar baronien : ar garantez a ziskan justis an aotrou Doue; roel en deus e c'her e talc'ho sonj vat eus eur verennad sour roel en e hano.

Evito da veza kizellet er mean, ar skeudennou-ze a yoa great kaer kenan. Setu perak e chommas an dud bamm-tet-oll da zellet outo, ha ne oe nemet ar youc'h-ma e-touez ar re a yoa eno : « Nak hen a zo kaer ! » Setu ive ar gomz a lavar c'hoaz hirio ar re her gwel evit ar wech genta.

Goude ma oe benniget ar c'halvar e oe eur ban-vez bras. Ar re holl a yoa bet o welet al lidou a yoa ive pedet d'al lein. Thereza a yoa hag a deue dre douez an dud, bepred laouen ouz an holl, ha modest en he doareou evel pa vije eur werc'hez eus an nenv. Perig a yoa tost d'ez, gwisket e floc'hig, ker mignon, kel laouen hag eun ealig. Mes ive nak hen a yoa eürus e Plougastell ! Ar vuez a yoa ker c'houec'h evitan, kement a anaoudegez vat a yoa en e galon ma klaske dalc'hmad an doare d'he diskouez d'e vadoberourien. O chom evelse tost atao da Dhereza e krede miret outi da goueza e droug ebet e kensas ma vije riskl evit he buez. E galon vat a gase Perig eun tamm re bell mar-teze : hogen, an demezel na glemme ket eus se. Meurbet e karie ar bugel, ha neuze digas a rea enc'hor d'ez eus an amzer tremenet ganti e Kloc'hars. N'ankounac'hae ket penaos e oadet frealzet en doare harlu-ze gant karantez ha stagedigez tud ar geraden-ze. Sonj mat he devoa ive eus ar bro-

Ar prijou a deu da glozan al loden-man eus ar gouel. Laket hon douz aman, ar zun-all, hanoiou ar vugale.

Kemerint kalon da lenn bepred brezoneg, skoaz-zellet gant Loeiz Voris, a gemer evez oute ; kemerint ive, 'vit obet gwel, koumananchou eiz real da *Groaz ar Vretoned*, hag o devo lod en holl goueliou ar *Vreuerie*, hag eur c'haier o devo ive da zeski skrivann.

Breman e sav c'hoariou 'n eur stumm-all : jach perchen ha men-pouez. Ar bôtred vat a ra eur zell war ar berchen neve droc'h et a zo astennet war al leür o c'hortoz pion a zäve he feun d'ei da krech'h. Goude meur a dol-essa, unan a c'hoarve hag a lak anei ken zoun, ken plom hag ar banniel bras, de eur pardon.

Yves-Marie Morice, eus Kervinou, eo e hano ; goneet an eus, 'vit ar c'hrog, daou bakad butun.

Breman, bec'h d'ar men-pouez ! Jean-Marie Morice, breur Yves, a ro d'eun ar zailh pellan, hag ar butun a ya gantan, goneet mat.

Achu ar gouel hag achu ive an devez. Hast hon deus, kent an noz, da drugarekat, eur wech c'hoaz, an itron Moris hag he bugale ken dereat en hon c'henver ha ken kalonek evit treo ar Vro.

Ha breman, kenavo da via !

D.-N.-D.

AN " DÉLÉGUÉ "

Eul loen sêurt 'peus biskoaz gwelet,
Ru e gof ha glas e vrached,
A gerz nebeut war dizolo,
Dambhvel ouz lous pe ouz gô ;
Eul loen lost berr, skouarn loriken,
Hanter-konifl, hanter-azen...
'N eus hano 'bet en brezoneg,
Mes badeet eo en galleg
An « délégué ».

Mar fell d'ac'h goût diouz e andon,
Diwar eur giez fraumason,
En Pariz, 'oe krouet ar ras,
D'hanter-noz, 'n korn ar c'ho'hu bras ;
E 'dad oe Komb, ar c'hoz sorsor,
Hag e baeron oe Lusifer...
Aboue ar ras he deus kresket,
Betek 'n hon Breiz eo anveet
An « délégué ».

Kaset 'zo bet da bep parouz,
Eun tam had eus al loen pikous ;
Forz en pe tu e valefet,
Hano eus al loen e klevfet... .

mesa great d'ezo da vonet eur wech d'o gwelet. Araok pell e sevenas he c'holmz.

An deiz ma tizroas Thereza da Gloc'hars a oe eun deiz kaer.

An holl a yeas e prosesion da zigemeret ar baron hag e verc'h betek ar groaz savet gant Thereza he-unan. Ar baron hag e verc'h a oe teneret o c'halon oc'h adgwelet ar groazig-se e leac'h oant en em gavel o daou. Eur zell great gant an demezel war ar groaz, hag eun nebedig komzou lavaret ganti e pleg skouarn he zad a deuas da veza eur vammenn a levezeg evit Kloc'haz. Hag, e gwirionez, ar baron a zavas e vouez da lavaret d'an dud vat-se e felle d'ezan sevel, e leac'h kroaz Thereza, eur c'halvar bras, ker kaer hag hini Plougastell.

« Fellout a ra d'in, e talc'hfac'h sonj atao ac'hanon hag eus va merc'h. Bep gwech ma teua'c'h da bedi dirak ar c'halvar-ze e teuo sonj d'eoc'h eus an amzer m'edo va merc'h o chom en ho touez ; ha mar hoc'h eus karet anezi e gwirionez, c'houi a bedo evit hag evit he zad. »

Ar bobl a eur vouez a lavaras meur a wech e kariat ar baron hag e verc'h, hag e vichenet bepred anaoudek d'ezo.

Evel ma c'heller kredi, d'erc'hel a rejont d'o ger, ha dizole e oe gwelet eur c'halvar eus ar gaera o sevel war an dachen e leac'h m'edo ar groazig koat. Houma a oe lakeat en iliz da veza miret. Biskoaz paresioniz Kloc'hars na deujont da bedi dirak o c'halvar hep lavaret ive eur bedennig bennak evit ar re o doa e zavet. Hanvet eo bet zoken tri pe bevar c'hanv vloaz *Kalvar Thereza*.

Ar baron hag e verc'h a vevas pell, karek meur-

Ma zo toriellet 'n toull ho tor,
Stlabeet fask war hoc'h enor,
Gret gaou ouzoc'h, kalz pe nebeut,
Pion 'zo bet eno tremenet ?

An « délégué ».

Al loen-man an eus fri tano,
Hag a vale, kvit a voto ;
Dies 'vije heuilh e roudou,
Ha dizolo e holl ardou,
Panevert d'e grog bunumus,
Ha d'e hetou a zo fléarius ;
Diouz an tol dant da diouz ar c'houez
'Ve anveet al loenig kez,

An « délégué ».

Arsa, kouerien, labourerien,
Pinvidien kouz ha peorien
Gwehall, c'houi 'trezoc'h a ouie
Stignan pehou d'al loened goue,
C'houi ouie, gant eur skoum war red,
Pakan 'l louarn koz en e ched,
Hastet 'ta klask ho tiffennou,
He lazomp c'houenn en e lèrou
D'an « délégué ».

C'houi, tud a ijin hag a vrud,
'C'h eus gret ken lies a vruzud,
Kavet louzou ouz ar rac'hed,
Hag ouz pep seurt amprefaned,
C'houi, mestr ar spered, Edison,
'Peus diwanet an « telefôn »,
Hastet klask d'imp eul louzou c'houek,
Pe eur pech mat, da bakan chek
Delegeed.

P'am o tapet 'n hini du-man,
Me yei dak en kër d'hen gwerzan ;
Me a werzo d'ar souprefed
Kroc'hen al loen lies a skoed :
« Da lakat 'n noz war ho pruched,
Otro kez, pa vêt sifarniet,
Pe d'ober gouriz 'n ho kerc'hen,
N'eus ket gwelloc'h evit kroc'hen
Eun « délégué ».

Pa vin-me et da depute,
— Allas, né vo ket c'hoaz fete ! —
Neuze vo gret eul lezen-all
Da distrujan al loen raktal.
Mes, da c'hortoz, eu pep kanton,
Da vianan, c'houi gano ma zôu,
Hag a laro holl en eur vouez :
« Foci ha harao d'al loen divez,
An « délégué ».

FLIK-FLAK,
Neb a bak a bak.

bed gant o zujidi. Mamm an dug koulskoude n'he devoa ket ankounac'heat Thereza. Gervel a reas anezi da zont da Roazon, evit ma vije da dosta d'an dukeaz. Bez' e oe meulet ha karet eno kouls hag e Plougastell, abalamour c'he vertuziou ha d'he skoueriou kaer. Perig na oe ket ankounac'heat. Thereza a gemeras preder gantan, hag hema dre e furnez a oe bepred din eus e vadoberourez.

Ha c'hoant hoc'h eus e lavarfen d'eoc'h brema petra eo deuet kalvar Kloc'hars da veza ? Siouaz ? an dispac'h vras n'he devoe ket muio'c'h a zoujanz evitan eget evit kalz a re-all. Diskaret e oe ha kaset da netra. Klasket e oe divezatoc'h, pa deuas ar peoc'h, sevel ar C'halvar en e zav ; hogen, ar barrez n'oa ket pinvidik ; ma oe red tremen gant eur groaz koad henvel ouz an hini savet gant Thereza a Blougastell.

N'oa ket eat koulskoude gant an tamm diveza eus ar C'halvar pep envor eus an demezel vat. Meur a dad koz o doa sonj c'hoaz da veza klevet o zud o tispleg an histor ; ha setu perak e oe hanvet ar groaz pell amzer c'hoaz *Kroaz Thereza*. Bez' eua bepred en he zav, e kroaz-hent Kloc'hars, hag alies ez eer, evel kent, da staga kurrunennou ha garlantez outi.

Kalvar Plougastell avad a zo bepred son en e zav, mont an nep a garo d'e welet. Nak an dispac'herien nak an amzer n'oe deus gallet beteg'hen dont a-beun anezan. Fizianz vat hon deus e chomo c'hoaz pell amzer evel-se.

KLAODA.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOURMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skodec evit ar broiou estren hag evit ar Breiz-keltiek.

RENERIKEN

E. AR MOAL, (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMHANOUC-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer aez

Ar brezonek hag feiz,
A zo breur ha c'hoaz en Breiz.
FUNKZ AN GIZ.
Gant brezonek eo dud ar feiz,
Gant ar gallekzoio a Vreiz.
FUNKZ AN GIZ.

Dalc'het bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'hed!
MILIN.

Skrivadeg "Breureiz ar Brezoneg" a zo achu

Pevar ha daou-ugent labour hon deus bet digant lugale *Breureiz ar Brezoneg*. Adalek breman, ec'h eomp d'o lenn ha d'o renkan herve o zalvoudegez. Dindan pemzek de aman, d'an hirran, 'e vo embannet ha kaset ar prijou.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otrou CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otrou CLERC, kelennet Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

PIPI GONTO

Murvailhou neve

gant E. AR MOAL (Dir-Na-Don)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gweneg ar frejou-kas, da laret eo nac gweneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag 'nen sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivan reiz ha sklér ar brezoneg.

Skrivan d'an Otrou Moal, 27, bali Charner, Sant-Briek.

GOURCHEMENNOU DA "BIPI GONTO"

Lennerien ha prenerien levr neve *Pipi Gonto* a ra d'eau digemer mat.

Skrivan reont, warlerc'h lenn.

« Ma gwellañ gourc'hemennou ! Ar *Pipi Gonto* neve-man a zo eur gwir vreur d'egile. Keun 'm eus, hepken, n'am eus ket kavet ennan marvailh *Chapeled hoz*, unan eus ho re wellau.

Dont a rey 'benn eur wech-all.

Gras d'ho levr da veañ digemeret mat gant bugale Treger ha d'ober d'e karet mui-ouz-mui o yez... »

Eun all a skriv :

« N'am oa ket bet amzer a-walc'h da beurañhni lenn ho *Pipi Gonto* eil eus an hano. A dra zur, mat re eo, ken mat hag an hini kentan, evitan da veañ dishesvel c'hoaz diouz egile. Ho pezig-c'hoari 'zo fentus tre ; eun druz n'hellfed ket e c'hoari.

Lenn a vue ar *Chaz du*, gant ar giziu diwar ar meaz displeget ken mat ; war ar Chouaned, danevellou neve ha pouezus. Me gred e plijo kement-se d'al lennerien. »

Mil levr *Pipi Gonto* a oa bet moulet ; koac'h an ra ar bern a de da de ; piou bennak an eus c'hoant da gaout e hini a rey mat hastan kas e hano hag e nac gweneg warnugent, gant aon ne c'hoarvezfe evel 'vit ar *Pipi Gonto*-all, e teure c'hoaz da c'houlenn anean, eur bla goude eo bet gwerzet an hini diweañ.

Roll Rakprenerien "Bleuniou Yaouankiz"

Dastumadou zoniou ha gwerziou
gant AR YEODET

An Aotroue :

Moel, person Santez-Tréfinna.	2
Pré, kure Locaro.	1
An abad Ar Gall, kloareg yaouank, Kergrist.	1
Guillou, person ar C'houerc'hed.	1
Bricquair, kure ar C'houerc'hed.	1
Bonniec, kure ar C'houerc'hed.	1
Marie Bosquat, Kallak.	1
Ar Page, « Bugel Breiz », soudard e Luneville.	1
Roullé, kure Duault.	2
Jamet, kure Maël-Pestivien.	1
Goasdoué, kure Gwengamp.	2
Loeiz Morice « Penn-Dero », Sant-Agathon.	1
Ollichou, person Karnot.	1
Bourse, kure Karnot.	1
Jean Madigou, Plouaret.	1

NERZ AR BREZONEG

Klevet a reomp c'hoaz eur bern tud o c'houlenn :

— « Perak skriva brezoneg, perak karout ar brezoneg ha perak difenn ar brezoneg?... Evidomp, emé, ne welomp talvoudegez abed d'an dra-ze... »

— D'an dud-ze e larin : « Paourkez tud, n'ho peus bisokoaz pouezet mad ar pez a laret, anez e vijec'h ar c'hentan oc'h anavezout *Nerz ar Brezoneg* hag an ezom a zo d'hen miret, pegwir ar Yez eo ine, histor ha bue eur ouenn-tud (race). Mar n'hallet ket bouta ze stard en ho spered, sonjet 'ta neuze petra e teufe da vezan hon Breiz divrezonekaet. Sellet eun tam petra eo an dud-ze o deus ankouaet pe dilezet ar brezoneg. Ne dint na Galloued, na Bretoned. Bezan int eur vriz-tud bennek, diwriennet ha kollet. N'o deus na diaze, na Bro, na bue abed ; o c'h'alou a zo dinerz hag o spered amgred war hep tra... Beva reont de ha de hep levezon, na glac'har... An dud-ze a zo yenet hag ar Maro a zo gwall-dost d'e.

Eur vroad tud evelse a zo d'ar vezan huallet.

Ar Yez eo ijin pep broad-tud. Dre ar Yez eo an eus pep pobl e stum-beva, e c'hiziou, e gredennou hag e histor.

Stum-beva, giziu, kredennou eo a zishenvel ar Vretoned diouz ar poblou-all hag a ra eus Breiz eur vro ken koant ha ken brudet. Lemmet an holl dreo-ze digant Breiz ha Breiz a zo maro da viken.

Hon enebourien a garfe ze, mes, en despet d'o c'hoant, Breiz n'hall ket mervel, rak zoken ar Vretoned, gendarmerien o Bro, pe ve droug pe ve mad gante, a gar — hep gouzout d'e — hag o Bro hag e giziu... Ganet int en Breiz hag evel an derven a sank dan he gwirion en douar m'eo diwanet ennan, int ive a reuk kemer nerz, nerz kalon ha nerz kof en histor hag en Yez o Bro.

Ar Vretoned-ze a zo ken kustum da gomz brezoneg, ken kustum da vevañ en Breiz m'o deus ankouaet krenañ petra eo Breiz, petra eo ar Brezoneg.

N'hallont ket anavezout talvoudegez ar yec'hed pegwir bisokoaz n'o deus bet kleved!

Lezomp ané 'ta d'ober trouz ha da c'houlenn perak skriva, lenn ha karout ar Brezoneg. Adalek an de ma vo dilezet, int, marteze, a vo da gentan o klask sevel anezan, henevel ma vefont ouz ar pesk a c'houzant dienez pa ve hesket ar wazig douar.

Koulskoude ze na harz ket ané d'ober droug d'ar brezoneg ha d'o c'henvroiz. En eur gazout ar

yez a lakont o c'henvroiz dizeblant hag e pellaont diouzimp kalz a dud yaouank troet mad ha na glaskfent nemet anavezout talvoudegez ar Brezoneg evit he difenn gwasoc'h a ze.

A drugare Doue, en-kenver ar seurt tud-ze ez eus re-all hag a gar kalz o Yez hag o Bro ; ar reman eo an niverusan hag o filjadur eo klevet komz, lenn ha kana brezoneg.

Warne ar Brezoneg an eus eur galloud bras. O c'h'alou, evel eul liorz temzet mad, a c'h'hortoz ar greun a dle diwan, enni evit tenrel goude eun cost kaer ha founnus.

Karante Breiz hag ar Brezoneg a zo c'hoaz en o c'hreiz evel eur fulen dan hanter-varo. A-walc'h eo d'eun ezennig arriout hag en nebeud a amzer ar fulen dan a zo eun tantad... Ar Breizad 'zo dihanet hag e galon n'eo ken frank a-walc'h, e spered ledan a-walc'h, e vouez kaer a-walc'h, da garout e Yez, da veuli e Vro ha 'da gana he c'hoantiz!

Seulvui ma ve fall aochou ar môr, stankoc'h e ve stlabeet an touriou-tan. En hon Breiz, seulvui m'eo gwasket hon yez, kalonekoc'h ive e ve an difennourien ha pep difennour, a zo d'ar Breizad paour evel eun tour-lân a ren anezan da sturia e vagig.

Peb amzer an eus he drubuilh ; mes Doue, herve an droug, a kolenna nerz ar vad.

Evelse war hon Breiz e welomp o sevel bemde pôtred yaouank dispont. D'al labour kalod e kinnigont o diouvrec'h nerzus ha d'o Bro e westlont o bue hag o c'h'alou.

Trubuilhou o Mam-Bro o deus poaniet ané, ha da heuilh reo kosoc'h e kerzont sader, evurus o vezan kavet o hent hag o c'h'allout, d'o zro, bezan en park Breiz-Izel micherounien ar vad ha difennourien an hêrez (heritage) sakr o deus hon gourdadou lezet ganimp.

Eun tol gwialen burzudus skodet du-man ha du-hont ha kerkent e sav eur Barz neve, gouezet gant Nerz ar Brezoneg.

Arvan e kavomp eur pôtrig dister a gotf, mes dihua a lagad ha lem a spered. Enpad daou pe dri devez an eus ar filjadur da welet eur Barz, da gomz gantan : Goulen ra digant ar Barz petra eo Breiz, ar Vretoned, histor ar Vro... Evurus o vev a daou en eur garante deuer, groet koulz laret o c'h'alou an eil evit eben, ar Barz hag ar pôtr yaouank a dremen pennadou dudius... Kaer o deus konta, ne larout trawalc'h. Kement, en gwirione, a zo da laret ha ken talvoudus eo kement tra a Zell ouz Breiz, ma kerz an amzer peñt re founnus evite... Gant glac'har en em dispartiont, mes an amzer n'eo ket bet kollet ; an had a zo kouezet en eun douar mad... »

Eun nebeut sanvezioù goude *Kroaz ar Vretoned* he devoa eur c'hentlabourer a gresk ha Breiz-Izel eur Barz ouzpen, eur Barz gwirion.

Ganet war eur mene uhel, ken uhel ma weler diwanan ar beden o sevel d'an Neuz hag an aefe oc'h ebat war ribl garidou ar Baradoz, ar Barz neve, gwir vogel d'e dadou, a vo breizad penn-kil-ha troad, ha, gwech ha gwechall, dindan an hano *Penn-bretan* e kaso d'ar *Groaz* gwir vleuniou Breiz evel *Kaeran beaj*. *Kiniad ha digemer mad ar barouzieniz d'o ferson*, hag all...

Aze e kavomp eur pôtr yaouank-all, evel e dad bugel d'ar maeziou, d'ar parkou ha d'ar frankiz. O heuilh kelennadurez ha kentelioù eur mestr dispar, e galon a zig ar abred d'ar Brezoneg ha, dindan an hano nerzus *Penn-Dero*, e kinnig eur wech an amzer d'o genvroiz perlezennou evel *Ma*

GIZIOU KOZ HA KRISTEN AR VRETONED

Evit hor Bretoned kristen, Doue n'eo ket eun diaveziad, mes beza ez eo ar pezh eo e gwirionez. ar Mestr bras, hag ar penn kenta eus an ti, an Aotrou Meur eus ar gear hag eus ar vro; beza ez eo evito eun Tad merrbet karantezus ha merrbet karet; beza ez eo ar C'hrouer, an Holl-C'halloudeg, rener ar bed-oll; beza ez eo an hini a bourvez da ezommon an holl, tud ha loened, o lakaat eost da zont en hor parkeier, frouez e gwec'h hon liorzou, yeot en hor prajou hag en hon letonennou; beza ez eo an Hini a ro d'hor c'horf nuz ha yeched, d'hon ene spered ha kalonegezh; mes beza ez eo ive an Hini a sko warnomp, pa ne zentomp ket outan, hon asten war eur gwele eyit hor c'hastiza, hag hon laka da zewel yac'h ac'hano, pa blij gantan. Ar Breton kristen a oar ze, a gred ze hag a ziskouez e greden dre e gomzou hag e oberou. Heuilhomp anezan, taolomp evez outa ha sel-louomp e gaozioù. Mar koms ouz eur bugelig, e lavaro: « Doue r'ho pennigo, o aelig Doue! Doue r'ho kresko bras, va bugel! Doue r'ho talc'ho war ho mad, o krouadur paour! » Hag o troi oc'h an tad hag oc'h ar vamm: « O! eun tam brao a baotr en deus roet Doue d'oc'h ama, eur bugel koant ha kre, Doue r'her bennigo. Pebez gwaz a ray hema, eun deiz, ma ro Doue d'eza buez ha yeched! »

Me am eus anavezet eun tad (hag hen anavezan hepret, rak bev eo c'hoaz), eun tad Breton, eun aotrou eus ar ouenn goz, ha bep mintin, ar c'henta tra a rea d'e vugale, pa o c'have, oa ober sin ar groaz war o zal gant e viz meud, o pokat d'ezo, hag o lavaret goustat ar ger-ma: « Doue r'ho pennigo, va bugel! »

Kredit ac'hano, ar merk santel-ze lakeat benn-dez gant an tad mat ha kristen-ze war dal e vugale, hag ar bennoz pendeziet roet d'ezo gantan, a zo eat don en o eneo hag o deus desket mat anezo. Me a yafe e klaouestre ne vezo morse ar vugale-ze tud difeiz, tud dizoue, penseliou fall ha divez, evel ma 'z eo kalz lakizien eus hor c'hearion marc'had; ar re-ma, o veza bet savet gant o zud paian evel paianed, pe gentoc'h evel chatal, a ve evel paianed ha chatal, hep feiz, hep mont war-dro iliz ebet, ha lik da ober mez da baotred Sodom ha Gomor.

Lezomp an traou dislonket-se, ha distroomp d'hor Bretoned vat.

Ha tremen a reont-i dirak eun alar er park, e lavaront: « Doue r'ho pennigo! » Lavaret a fell d'ezo dre eno: *Doue va pennigo an dud hag al loened a labour gant an alar-ma, hag al labour a reont gantan.*

O koms eus ar beleg e leveront ivez: « Doue r'her bennigo. An aotrou Person ac'hann hag an aotrou kure a zu-hont. Doue r'ho bennigo... »

O koms eus al loened e leveront: « Doue r'ho dionallo! Eur vicih vrao ha doareet mat hoc'h eus aze, Doue r'he dionallo! »

Ha beza o deus eur gomz ter da lavaret da unan, eur rebech eun tamm c'houero da ober d'ezan, ha sonjal a raint-i hevelekaat anezan ouz eul loen bennak, o veza m'en deus great eur zotoni, eul loustoni, eun dra bennak dizereat, e lavarint: « Penaos! lous ma 'z oc'h, ki sot ma 'z oc'h, respet d'ar vadiziant a zo war ho penn!... »

Mar komzont eus eun dra lous bennak epad ma emaint o tibri ha dirak kompagnunez, e lavarint: « Respet d'oc'h, va zud vat, ha d'ar boued benniget-ma. »

Klevit anezo c'hoaz, pe i a zo o koms gant re-all, pe i a zo o-unan, o lavaret bep eur mare: « Doue r'am zikouro! Doue ma c'haso gantan! Va Doue, ho pezet treuz ouzin! Pardon, va Doue! » Ar ger Pardon, va Doue! a lavaront dreist-oll pa zigouez d'ezo lezel da vont ermez eus o ginou eur gomz bennak treuz, dizereat.

Ar Werc'hez Vari, an Eled hag ar Zent n'int ket ankounac'heat en holl gomzennou-ze a c'hel-lomp da henvel pedennou berr: « Itron-Varia venniget, deut d'am zikour! Am diwallit, va El mat benniget! Ar Werc'hez Vari hag an Ele santel d'ho rena ha d'ho tiouall, tidigou paour, d'ho kas war ho mad betek penn ho peaj, tremenidi geiz! » Ar gomz *me a bed* a zo lezet er meaz. An dra-ze a zo egziz ma lavarfech: « Me a bed ar Werc'hez... d'ho... »

Gwell c'hoaz ar Breton kristen klanv war e wele. Seulvui a boan en deus, seulvui e ped kalonek an Aotrou Doue, an Eled hag ar Zent da gaout treuz outan. Her c'hlevet a roet o lavaret hep ean: « Pardon, va Doue! Pardon, va Doue! » A! ar Breton kristen a wel er poanion a gouez warnan dour Doue oc'h skoï, oc'h e gastiza evit e bec'hejou, hag e lavar d'e Grouer evel eur bugel doujus d'e dad: « Pardon, va Doue! Pardon, va Zad a zo eu Nenv! »

Setu ama c'hoaz. Ha dont a ra kaoz eun den maro, nevez varo, pe pell a zo maro, e klevet hor Bretoned kristen o lavaret o koms anezan: « Doue r'her pardon! Peoc'h Doue 'n e ene! Gras d'ezan da vont d'ar baradoz, mar n'ema ket c'hoaz! » Ha mar o deus bet d'eu em glem dioutan epad m'edo war an douar, e lavarint, o poueza eun tamm muioc'h war o c'homzou: « Doue r'her pardon, ar paour kez den! evidon-me a bardon d'ezan an holl droug en deus great d'in. » Ha mar chom en o c'halon eun tamm rouden eus ar boan great d'ezo gant an hini maro, e lavarint oustenn: « An den paour anezan! ema brema dirak Doue hag a oar an holl boan, an holl gaou en deus great d'in! »

(Da heuilh).

KLAODA.

KANTIK EVIT KLOZAN MIZ MAE

Ken a vo d'it, miz maë,
Miz ma Mam 'zo en Nê,
Kaëran miz eus ar bla,
A lauenna pep tra.

Gant ar brasan dudi,
Me 'wel da digerni,
Ha'm eus poan ar brasan,
An deiz den d'az klozan.

Ar bokedo ken koant,
Kân al lapouz ken drant,
Lar d'imp kanan seder
Meudidi hon Mam ger.

Tremenet, mizezo,
Rak neuze me 'glevo,
Gand tud yaouank ha koz,
Meuli Mari bep noz.

Meuli he zantelez,
He c'hened, he furnez,
He galloud, he brazder,
He c'halon ken tener.

Ya, hast 'm eus c'hoaz bep noz,
Pa deuio miz ar roz,
Da glevet ar mouezio,
O kanan kantiko.

Na kaer e ve neuze
Mouezio ho pugale!
'Vel kân an aloued
O pignal 'barz an ér;

Neuze, kân bugale,
Ha tud yaouank ive,
'Ra tregerni parko,
Koulz hag an ilizo.

Me 'veio hoc'h oter,
Kempennet gant preder,
Mar gallan, 'vezo c'hoaz
Kaeroch evit biskoaz.

Mez pezh 'rey ma dudi,
E vo gwelet warni,
Ho portred binniget,
A vleuno kurunet.

Mes, ziouaz! Marteze,
Na vevin ket neuze:
Doue hon c'has gantan,
Pa zonjer nebeutan.

Mar ven maro, pedan
Ma breudeur 'zo aman
Da viret d'am ankoat,
En ho fedennou mat.

Ha c'houi, ma Mam dener,
Mar am galv ma C'hrouer,
Gret, pa 'z on ho pugel,
Ma rin eur marv santel.

KANAOUEN AR MESAER

O heolig Doue! heolig mat,
Digoret splan splan ho lagad,
D'am bioc'hig koz da vrechenn,
'Vit mac'h in buhan d'am merenn.

DISEAN

Ma yond a zo war ar leur-zi,
Hag ar yer oll ouz hen poki;
Ma leaz a zo en skul ar c'hi.
Hag ar c'hijer ouz hen plapi;
Ma loa en toull ar skolped;
Hag al logod 'tout d'he c'hriguget!

Ha c'houi, bioc'hig koz, bioc'hig vat!
Gret bec'h ive d'ho pevar droad;
Gret tud ar park en eur vrechenn,
Rak naon bras am eus d'am merenn.

Penn Breton.

KERIZ HAG AR BREZONEG

En ker, 'vel ma ouzoc'h, n'eman ket ar c'hiz da gomz brezoneg. Mezus eo 'vit Bretoned ker komz yez o zadoa, ar yez ken koz, ken dudius, ken santel ha yez sant Tual, sant Ervoan, hag all. Komz brezoneg, ze 'zo mat 'vit tud ar maez, 'vit ar baotred saout, 'vit an dud n'int ket bet er skolioù, mes evit krak-aotrone ker, 'vit eur c'houez bragou » bennak, pe 'vit eun drutell hep penn, leun a ougouilh, diboañ 'vel eur vran, ar galleg eo ar yez komzet.

Ha koulskoude, leret d'in, pehini eo ar c'hosan, pe ar brezoneg pe ar galleg; n'e ket dies laret. Ar brezoneg vije komzet 'n hor bro dindan Cesar, hag ar galleg n'eo anavezet mat nemet aboue Louis XIII. Setu aze eun dishevelidigez vras 'tre an oad.

Breman, pehini eo ar c'haerac? A dra zur, 'vit ar C'hallaoued, ar galleg 'zo dereat, mes 'vit ar Vretoned n'ouzon ket penos e tlefezet o yez koz 'vit digori o diouevrec'h d'ar galleg. En ker, koulz 'vel war ar maez, an tri c'hart eus an dud na ouzont ket a c'hallez.

En ker, n'eus 'met al loden vihan a dud oc'h ouzout galleg, mes al loden vras a gomz galleg fall, gant eun da gomz brezoneg.

Ne gomzin, aman, 'met eus Lau tregere.
En ger-man, an dud, ha dreist-oll ar merc'hed yaouank, 'zo gwell gante bezan lac'het 'vit komz eur gir brezonek hepken.

Er ruio, pa welan anè, ha pa glevan o c'haez, raktal e ruian en o flas. Disul diwean, e klevis ar c'homzou-man.

— « Ousqu' vas-tu, Perrine? Te voalà he pamper. »

Setu aze galleg Landreger, ma komprenet ar gir, evideron-me ne ran ket. Breman 'zo pemzek de, en Landreger c'hoaz, epad an ofereb-red, e oen test eus eun dra kazus. Goude ar pron, ar prezege a biguas er gador-zarmou, hag a vonez uhel:

« En hano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. Ma breudeur... »

Raktal an oll vrec'hed, itronezed, pe dimezelled reas eun hinj d'o feann, kement-se 'vit diskouel na komprenet ket ar brezoneg. Koulskoude, anavezont ren eno kalz a vrec'hed hag a intente ar brezoneg kouls ha me.

Petra 'zo kaoz d'an dra diot-ze, n'e ket ezet laret, mes sonjal 'ran penos eo ar c' respect hmain », a zo enebour d'an holl dreo zantel.

N'ho pet ket aon, merc'hed yaouank, daoust d'ac'h da vean en tog, da gomz brezoneg d'ho tad ha d'ho mam, d'ho mignoned ha d'ho mignonezed; n'ho pet ket a vez, rak nep a gar tra koz, a gar hepret tra vrao.

TRAOU-YEODI.

ISTOR FAVERNEY

Kinniget d'an dud yaouank.

Seulvui e vesker gant treo ar bed-man hag o klasker lakat da ziwan en hon zraouien eur vad bennak, forz en pesot doare, seulvui e santer eo red 'n em stagan diouz an nen e-unan ha 'n em zistagan diouz ar bed. An den e-unan a zo leun a avel, ha ma 'n em chileo, e klasko, kalz pe nebeut, e c'hloar hag e c'houeud e-unan, 'barz ar pezh a rey. Ma chileo moneziou an dud, prim ha prim en em gavo nec'het kas goût petra 'zo mat

F. G.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENERED

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNO-KONVERZ

Un Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer aez

Ar brezonek hag heiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FANKET AN GIZ.
Gant brezonek en dud ar feiz.
Gant ar galleketoù a Vreiz.
FANKET AN GIZ.
Dalc'hit bepred d'ho prezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het.
Ouspenn ar Ver, e ve Pec'he di
MUIS.

Roll Rakprenerien "Bleunioù Yaouankiz"

Dastumadoù sonioù ha gwerzioù
gant AR YEODET

An Aotrone :

Loeiz Gourlet, Ar Bobl. Kerazec.	1
An abad Joanno, person Plizidi.	1
An abad Corvaisier, person Plouec Mór.	3
An abad Helliet, person Trémeven.	1
An abad Le Fêbre, kure Pédernek.	1
An abad Corré, person Plouyoukan.	1
An abad Auffray, person Trévêrec.	2
An abad Raoult, person Kermaria-Sulard.	2
An abad Hello, person Gouanac'h.	1
An abad Sérandour, kure Gouanac'h.	1
An abad Menguy, person Kerity.	1
An abad Milou, person Pludal.	1
An abad Cozan, kure Plistin.	1
An abad Gonidec, kure Plistin.	1
Efflammik an Hénoret, Plistin.	1
An dimezel Anna Jaffrennou, Carnoët.	1
An abad Héry (barz Mene-Bre), person Karfod.	3
An abad Ar Balc'h, person Kalanher.	1
An abad Déniel, person Lomikel.	1
An abad Olivry, kure Kerity.	1

D'AM MIGNON AR YEODET

Eur blijadur dispar eo evidon gwelet tud yaouank lemm a spered, kristenien kalonek, o lakat war ar stern dastumadennoù brezonek deread — a zo enor eur skrivagnier evel mac'h int enor hon bro garet Breiz.

Gout a ret marteze ec'h on unan eus ar re gentan er C'hoste-an-Nord a zo diskennet en dachen breman zo oustpetu tregont vla da boanial, da stoum evit hon yez koz. N'em eus ket zoken c'hoaz losket ma zelen, daoust m'eo distardet mat he c'herden. Breman zo war dro pevar bla e oan bet pedet gant ar re gentan eus Barzed ar Vro da lakat moullau zul leor : *Kelen ha didui*. Mes, an aval na oa ket neuze a du; pan-eo-gwir n'eo ket dalc'het da c'hon a-benn, ar pez a oa goulennet diganin a c'hoarveo, a gredan, hepdale.

N'eo ket dleet d'in klozan ma lizer hep kinnig d'ac'h ma gwellan gwestloù hag ho pedi da skriva ma han en-touez rakprenerien *Bleunioù Yaouankiz*.

Da vean ec'h on laeret *eiz vla zo gant ar briz-Huguodad* a distruj Bro-C'hall, n'hallan kemer breman nemed 3 levr.

D'ac'h a wir galon.

Barz Mene-Bre.

Trugare a galon da Varz Mene-Bre! Aman en *Kroaz ar Vretoned* e welomp gant poan ar brezel zod a zo groet d'eur pastor ken mad gant tud dall ha diskiantet.

Ra zeuio Doue, dre beden e veleg santel, da skleiñjenni an dud kez ha da rei a neve da barrouz Kerfod peuc'h hag evurusted, ma strinko c'hoaz diwar Delen gaer diskibl Sant-Herve sonioù ha gwerzioù da *gelen ha da zidui* Bretoned an Arvor hag an Argoed !

A. Y. B.

Gouel Pleuveur-Bodou

Gouel Pleuveur-Bodou hag a zo bet padet daou de, 'n evo ket bet e bar c'hoaz etouez gouelioù *Breuziezh ar Brezoneg*. Evit ar wech kentan, 'zo bet staget eur pez-c'hoari ouz ar gouel; evit ar wech kentan ive 'zo bet gwelet niver a veleien hag an otrone a zo en penn ar Brezoneg en Breiz, o tont da heuilh ar gouelioù.

Dre-ze ar gouel-man 'n eus bet muioc'h a bonez evit ar gouelioù-all. Red eo esperi, zoken, e vo gallet, diwar skouer heman, kaeraat ar re-all en amzer da zont, da vihanan, o stagan oute eur pez-c'hoari.

Benn ar zun a deu, — rak re divezat omp 'vit ar zun-man, — vo kontet aman penn-da-benn, doare gouel kaer Pleuveur.

Adalek hirie, koulskoude, e lakomp hanoioù ar vugale o deus bet prijou 'vit lenn Brezoneg :

Setu int aman dre renk; da gentan, hanoioù ar vugale, pôtred ha merc'hed, o devoa kemeret koumanachoù 8 real da *Groaz ar Vretoned*; war-lerc'h ar re o devoa lennet ive, ha mat sur, kalz ane, mes n'o devoa ket c'hoaz kemeret *Kroaz ar Vretoned*.

I

Pôtred. — 1. Francis Riou; 2. Jean-Marie Calvez; 3. Jean-Marie Ollivier; 4. Alexis Le Flem; 5. François Prat; 6. Joseph Fichou; 7. Henri Guillou; 8. Henri Le Bail.

Merc'hed. — 1. Jeanne Mordellès; 2. Bernadette Luron; Marie Mangard; 3. Marie Etesse; Marie Derrien; Jenny Merrer; 4. Anaïs Pérón; 5. Yvonne Urvoy; 6. Rose Daniel; 7. Jeanne Toudic; 8. Louise Nicol; Jeanne-Marie Riou; 9. Yvonne Boustouler.

II

Pôtred. — 1. Henri Le Goff; 2. François-Marie Le Grand; Alexis Le Moal; 3. Pierre Dutertre; 4. Gabriel Bivic; 5. Victor Nicolas; 6. Alexandre Damany; 7. Joseph Le Grand.

Merc'hed. — 1. Lucie Bivic; 2. Angèle Bivic; 3. Nathalie Guézou; 4. Alice Bourdellès; 5. Joséphine Bivic; 6. Jeanne Lossouarn; Thérèse Guézou; 7. Maria Le Gall; Clotilde Chevalier; 8. Françoise Lagadec; Angèle Bivic; 9. Françoise Keranflec'h; 10. Marie Aurégan; Berthe Derrien; 11. Bernadette Masson; 12. Augustine Béver; 13. Francine Hengoat; 14. Eugénie Philippe; 15. Jeanne Hengoat.

Josefin Duchêne, eus Gouelin, ha Jean Guyomard, eus Lanvilin, o deus gouest bep a loden en c'hoari zac'h Pleuveur-Bodou. Kaset vont d'ê hep dale.

Setu aman hanoioù ar vugale o devoa bet prijou dirion en Lomikel, evit bean lennet brezoneg.

Pôtred. — 1. Emile Bihan; 2. Emile Querreec hag Yves Bonniec; 3. Yves Clec'h; 4. Théophile Riou.

Merc'hed. — 1. Mathilde Nédelec; 2. Françoise Brozec; 3. Eugénie hag Aune-Marie Ollivier; 4. Adèle Ruvoen.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otrou CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otrou CLERC, kelennur Collège Notre-Dame, Guingamp.

LOMIKEL-AN-TRAEZ

Eur pardon hadsavit. — « Pôtred Lomikel. »
— « Breuziezh ar Brezoneg. » — Eur bobl evurus.

Meur a wech eo bet digouezet d'imp klem war dud hon Bro a deu, dre lezougezh da zilezel alies o fardonioù kaeran. A dra zur, ar fe o vihanat eo a zo kiriek da zilez ar pardonioù; kollet gant e fe, eur rummad eus hon c'henvroiz na gavont ken an hevelep didu o tarempredi pardonioù.

Gwir eo, hep eur spered a fe eur pardon breizad an eus nebeud a dalvoudegezh evit an dud klouar: ha kalz, siouaz, na welont en eur pardon nemed eun digare evel eun all da dremen, da laz an amzer. D'an dud-ze eur chapel goz a zo eur bern mein bennak, ha keltiek ma tostaont d'ez i eo evit ober fent.

Ma vije muioc'h a fe en kalon hon c'henvroiz, mar 'dije muioc'h a garante evit ar zent koz o deus groet hon Bro ha frealzet hon c'hendadoù, pep chapel a vije evite eul lec'h a zantelez, pep pardon eun devez biniget.

Allaz! Yenien eur rum ha dizebanter eur rum all, pe c'hoaz o lezougezh, o deus lezet en hon bro meur a chapel da goueza.

Netra na ra muioc'h a boan d'in evit gwelet war ma hent dismantrou eur chapel pe tammou eur goz goz gollet gant drez ha spen ha kollet en eul lec'h distro... Kement-se a frailh ma c'hallon... Ah! mar véveha an dud gwechall, emeon, na lezfent biken nag eur chapel en e foull, nag eur goz en he gourve.

A drugare Doue, an holl chapelioù na gouezont ket en o foull; hag en desped da Lezen an Disparti a zifram digant an Iliz ar gweneien he devoa ezom da dere'hel al lec'hioù biniget ha d'ober kant tra all, hirie c'hoaz e welomp kempeun chapelioù ha hadsevel pardonioù.

Setu ar pez a zo c'hoarvezet gant eur chapelig a Lomikel, eur chapel goz, chapel Gwenojan, gwes-tlet da zantez Jenovefan?

Den na oar ha diez a-walc'h e ve laret. Bepred eo, ar chapel darempredet kalz gwechall a deuas da vezan dilezet; dismantrret e oa gant an amzerioù hag enpad ugent vla hent Gwenojan a oa ankouaet. Koulskoude santez Jenovefan, a viskoaz enoret gant Lomikel dre ma pella an taer wasan gwelen: brezel, kernez, bosen, n'halle ket chom hep he chapel.

Eun ine mad, an aotro H. a B., perc'henn an douar, a gempennas ti ar zantez. Eur person kalonek, an aotro Deniel, a gemer kement a boan hag a zo ken karet gant e barrouzianiz, a lakas en e henn hadsevel ar pardon, a vije gwechall d'ar Yaou-Bask.

Deut eo gantan e daol da vad. Tremenet ar pemzek de aboua ditou en eun vodo eun toullad mat a dud en dro d'ar chapel da c'hortoz ar gousperou. Evel n'em ket ar c'hiz — al Lomikel bepred — da gavout eur gouel e-nnan, *Pôtred Lomikel* a zavas o zeat en-kichen ar chapel hag a roas goude ar gousperou eun abaden ar c'hoant, eun didu ar gwellan d'o c'henvroiz, deut eno da bedi ar zantez ha da dremen goude eun abardevez a blijadur. Dir-Na-Dor hag Ar Yeodet a 'n em gavas ive, galvet gant ar pastor mad da grouñ en e barrouz *Breuziezh ar Brezoneg*. Laret d'ac'h, lennerien ger, an evurusted a c'houzanver dirag ar chapelig a ve diez daonet. Eu hon bro a zo ken lies a lec'h dispar ma n'hall den rei oute eun displegaden reiz hep lavaret dalc'hmad, an hevelep tra. Lavaret an hevelep tra a zo skwiz ha faezus; gwel eo eta rei peuc'h.

Lezet ac'hanon koulskoude da lavaret eur gomz hepken. Evit ar Breizad a gar e Vro hag a oar anveout anei, chapel Gwenojan a zo savet en eul

GIZIOU KOZ HA KRISTEN AR VRETONED

O lenn ar Skritur-Sakr, dreist-ollal levriou kosa, evel pemp levr Moizez, e komzer enno eus an amzeriou kenta eus ar bed, eus a vuez ar Batriarched santel, e welomp gant eur blijadur an dousa, an doare da brezek, da welet ha da entent an traou e-touez hor Bretoned mat ha kristen diwar ar meaz, en hor bro ger Breiz-Izel. Gwelet a reomp tud an amzeriou kenta-ze o lakaat Doue araok atao e pep tra, n'ankounachent anezan nepret, her gwelet a reant e pep leac'h hag e pep tra, ne reant netra hep e aotre, hep beza her pedet d'o skleraat ha d'o skoazella, hag o devoa ennan ar vrasa fizianz, fizianz eur bugel en eun tad mat. Kement-all a dleer da lavaret eus hor Bretoned peuz-holl diwar ar meaz, ar re anezo n'int ket bet o koll o feiz leun hag eun er c'hearion marc'h had hag e skolioù a zo. Rak, eun dra eo, eas da welet, eur bras eus hor Bretoned hag a zo bet o tremen eur pennad mat a amzer e kear hag er skolioù, n'o deus mui ar feiz krenv, beo ha dispieg eus hor Bretoned chomet atao war ar meaz, n'o deus mui ar feiz eus a vugale Doue evelto. Kemeret o deus, kalz pe nebeut, gizioù ar vourc'hizien, evel keariz, pe falloch zoken, pa brizont c'hoaz koms ar brezoneg, da gemmeski anezan a gement a c'hearion gallek, ma n'eo mui brezoneg, mes eun tamm leuc'hach divalo, dizoare, dic'henn, great a druilhennou gallek. E daouarn ar Vretoned-se, troot e bourc'hizien, ne welot nemeur ar chapeled, ha ne glevot ket anezo o koms eur yez leun a feiz evel hor Bretoned eus ar ouenn goz.

"Velkent, pa lavaran : eur bras eus hor Bretoned, hag o deus tremenet eur pennad mat a amzer er c'hearion marc'h had hag er skolioù, a zo deuet da veza bourc'hizien en o feiz, en o gizioù, en o doare da goms, ne lavaran ket an holl. Eun darn anezo a zo chomet Bretoned, Bretoned mat en o feiz, en o gizioù, en o frezeg."

Hogen, mall eo d'eomp distrei d'hor Bretoned mat, da Vretoned ar ouenn goz. Gwelomp anezo e-harz gwele eun den klanv, an amezeg Per, a zo dalc'het war e vele gant eur gwall-glenved, hag ez eont d'e welet. Heuliomp anezo. O vont en ti e lavaront : « Doue r'ho pennigo, tud an ti-ma. » Respont a reer d'ezo : « Benniget ra vezot, c'houi ivez ! » Ha setu neuze e klever an diviz-ma :

— « Ha Per, penaos ema? a lavar ar weledou-rien. »

— « Per, dre c'hras Doue, a respont Loiza, pried ar c'hlanvour, Per a zo gwelloc'hik. Eun nosvez vat en deus bet. Fizianz am eus brema e teuio adarre, a drugare Doue hag ar Werc'hez... Va Doue benniget ! ne vije ket brao d'eomp dioueret anezan ken nebeut gant eur bagad bugaligou, evel a welit !... Va bugaligou baour, pedit an Aotrou Doue hag ar Werc'hez da roi ar yec'hed d'ho tad. » Hag endra ma komzer evelse e kaser ar gweler da gaout an den klanv.

— « Achanta, va mignon paour, emezo d'ar c'hlanvour, penaos en em gavit-hu? »

— « Eun tammig gwelloc'h, me ho trugareka eus ho madelez. A drugare Doue, kaout a ran eman touret warnon eun tamm. En noz diveza em eus gallet ober eur c'houiskig. »

— « O! ya, dre c'hras Doue, dont a reot adarre, va breurig. Lakit ho fizianz e Jezuz hag e Mari. Hor Zalver a zo eun tad mat hag ar Werc'hez venniget eur vamm vat. Ne vankint biken, mar hoc'h eus fizianz enno, da roi d'eoc'h ar yec'hed, evit ma c'hellot adarre gounit bara d'ho pugaligou. »

Hag o kwitaat e lavaront :

— « Mat kenavezo, Per, kenavezo, va breurig, eur wec'h-all. Gwelloc'h yec'hed d'eoc'h eta digant an Aotrou Doue. Ya, gras d'eoc'h d'en em gavout pare adarre ar c'henta ar gwella. »

— « Bennoz Doue d'eoc'h, va zud vat, eme ar c'hlanvour hag e bried ; gras d'eoc'h da genderc'hel e yec'hed ! »

Lakit e-tal gwele an den klanv-ze eur bourc'hiz pe eun den a zeskadurez, ha douetus bras ne glevot ket ganto ar seurt komzou. Goulennet e vezo gant ar c'hlanvour, a-wechou gant eun doare faeüs, ha poan en deus, e pelec'h en deus poan, an dra-ma hag an dra-hont. Komzet e vezo d'ezan eus ar medisin, eus al louzou, eus an amzer rust a ra, amzer hag a zo evit kalz war o meno ar penn kaos eus e boan hag eus an nebeut a wellaen a zo en e stad, eus eun amzer bouc'oc'h, amzer, gedal a dleer, na zaleo ket da zont, hag e wellao d'ezan neuze.

Mes, eus a Zoue hag eus a Werc'hez, o! ger ebet. Ya da! Daoust hag ar re-ze a zo c'hoaz ana-vezet gant an dud a zeskadurez? Daoust hag ar re-ze o defe c'hoaz ar galloud da zigas ar pare da zen klanv ebet? Ar medisin-avat hag e louzou, ar amzer vrao, an ear eus ar meaz, ha traon-all evel-se, a! setu aze hepken ar pez a zigaso yac'h ar c'hlanvour kez !

Ar bourc'hiz hag an den a zeskadurez a goms eus an traou-ze holl d'an den klanv, eus ar galloud o defe da roi d'ezan ar yec'hed, alies hep kredi nemeur ar pez a leveront, evit ober neuze? netra ken, da lavaret eun dra bennak. Marteze epad ma komzont evel-se, e sonjont enno o-unan ez eo great gant ar c'hlanvour, n'ez eus mui a bare evitan. Ar Breton mat, en enep, an den hep deskadurez, mes kristen gwirion, o koms d'e amezeg eus a Zoue, eus ar Werc'hez, eus ar Zent, eus ar vadelez o deus d'hor zikour en hon ezomou, da rei d'eomp gwellaen en hor poanion, d'hor para eus hor c'hilenvojon, pa en em erbedomp outo gant fizianz, oc'h alia anezan d'o fedi d'hen para, a gred ar pez a lavar. Pehini anezo, pe ar Breton kristen, pe an daou c'houezigell-all eo a zo da veza istimet ar muia?

Gwelit c'hoaz. Ha pare eo Per? Goulennit outan kelou eus e yec'hed, hag e lavaro d'eoc'h : « O! dre c'hras Doue, pe a drugare Doue! setu me deuet yac'h, yac'h yac'h-pesk. Mar plij gant Doue lezel ac'hanon brema e yec'hed, e c'hellin adarre ober va zammig labour hag gounit eun tamm bara d'am bugaligou geiz. »

Tennet diwar *Feiz ha Breiz* koz, gant

KLAODA.

AR CHADEN DORRET

Tôn : *Combien j'ai douce souvenance.*

An den yaonank, 'vel eur vleuen,
E drem dalc'had a ve laouen,
Ha me ive d'an oad-ze,

E vijen,

Pa welen ma c'harante,
Bemde.

N'ankouañ biken tra ma vevin,
Ar garante'm oa evit,
Na ma amzer tremenet

Tost d'ez,

Nag ar pez 'deus d'in laret,
Sekret.

Bezan 'oa eur gwir Vretonez,
Koant ha mistr evel eun heiez,
Daoulagad glas ha bleo melen,

Rouanez,

Holl verc'hed an dachen,
Serten.

Pell e oan bet ouz he c'harat,
O ya, gant eur garante kuzet,
Rak d'ez netra na greden

Da laret :

Mes ober rechomp eur chaden,
En ven.

Ar chaden oa eus ar c'haeran,
Gret gant danve eus ar gwellan,
Gret gant ar garante

An dousan ;

D'he zerri den, me lare,
N'hallo.

Nan, gant dir dimeus ar gwellan,
Ha trempet eus ar c'haletan,
Ar chaden na vije ket torret,

A gredan ;

Rak eus ar c'hevran e oa gret,
Me gred.

Eun devez e oa kât koulskoude
Eur benvek d'ober ar reuvelze,
Heman oa eun teod milliget,

Ha lem tre,

Gantan ar chaden 'zo bet torret,
Drailhet.

Setu achu ma evurusted,
Eur wech eo ar chaden torret,
Birviken ken war an douar,

N'am o ket,

Nemet enkrez, poan-spered, glac'har,
Hep par.

Set breman kollet ma c'harante,
Ha nijet ec'h eo pell diouziume,
Tec'het ec'h eo ma zurzunel,
Pell du-ze,
Kaset eo gant ar gwall-avel,
Pell-pell.

'Lec'h biken mui hi na welin,
Na biken ken he mouez na glevin,
Mui karante, esperans, evurusted,
Na gavin,

'Vel 'kichen ma dousig karet,
Tec'het.

Eul Lenner.

ISTOR FAVERNEY

Kelennadurez 'vit an amzer-man

Breman 'zo tri-c'hant via tremenet 'houe nosvez ar 25 a viz mae, eur burzud bras, unan eus ar re vrasan a oufed da zonzjal, a c'hoarveas en iliz an Itron-Varia-Wen, iliz kouent Faverney, er « Franche-Comté. »

An noz-se, ar venec'h o devoa expozet ar Zakramant a-ziavez d'ar c'heur, war eun dol kempennet gant lienaj ha goleier. Goude bean bet betek unnec eur o pedi, ar venec'h a yeas da gousket, o lezel ar Zakramant e-unan. Da der eur eus ar beure, pa deuas ar zakrist en iliz, ne oa ken repozour ebet.

Ne oa ken, 'n e lec'h, nemet eun tammik ludu, seblant oa bet kroget an tan ennan hag e oa bet devet. Kentan a zonzjas ar zakrist, 'oe klask, an hostiou zakr, 'vel a reas ar venec'h-all. A greiz ma oant holl, an daeron en o daoulagad, o klask 'mesk al ludu hag endro, setu eur c'hiloareg, 'n eur zével e zaoulagad, o welet 'us d'e benn ar zakramant hep chanchamant ebet, an diou hosti ennan. Ar zakramant a chome en éranee e-unan 'vel pa vije bepred eur planken dindanan, ha koulskoude ne oa netra nag 'us, na dindan, nag a goste.

Dre vuzud 'nevoa bet droug ebet, ha dre vuzud e oa chomet en é, hep flach. Chom a reas evelse epad ter eur ha tregont. Dek mil den, d'an nebeutan, a dremenas dre an iliz da welet ha da adori eur mirakl ken kaer. Dre ma oa ar mare-ze kalz e protestanted en Frans, bean 'oa ive en Faverney ; dont a rejont, evel ar gatolikid, da welet an darvoud-man ken estlammus.

Unan ane a deuas da welet ouспен ugent gwech, a zellas piz, krec'h traou, ma ne oa stag ar zakramant 'nep lec'h ebet, hag a renkas anzav ive e chome an éranee e-unan, dalc'het gant eun nerz dreist ha na deue ket nag eus an dour, nag abeurz tud, nag abeurz an natur.

Kalz a protestanted en em rentas katolikid.

An eskob a gasas beleien ha tud a vrud hag a skiant da welet ar mirakl ha d'hen disklerian piz war baper. Ne vankas ket a desteniou d'è, en tuhont da hini o daoulagad.

Ter eur ha tregont goude ma oe kavet, da laret eo an de warlerc'h, wardro 11 eur eus ar beure, ar Zakramant a ziskennas adarre, anean e-unan, etre daouarn eur beleg hag a oa a damdost o lavaret komzou ar gourreou en oferan. Ken goustad ha ken skanv e tiskennas war an oter, ken ne goueas ket diwar an troad an disteran greunen boult.

Diou hosti ar burzud a zo bet miret pell amzer. Unan ane, zoken, a weler c'hoaz en Faverney, é en ludu 'houe pell 'zo ; mes al ludu zakr-se a v-ri-r bepred. Eben, et da Dole, a oe kollet epad ar Revolution vras.

Setu istor burzud Faverney, ha setu eno perak eo gret eur gouel bras er gér vihan-ze, ar pamzek de diwean a viz mae, ha perak e oe diredet di eur bobl vras a dud hag ouспен ugent eskob.

Mes ar pez a zo c'hoaz muioc'h a lufr hag a bouez da ouel Faverney, eo dre m'eo 'n em gavet d'ar c'houzou ma 'man ar Pab hag an Eskibien oc'h embann dre holl ar gomunion pemdeiek 'vit ma teuo bro Frans, kazé dizec'het enni eian ar vue hag an nerz-kalon kristen, da enebi ouz hec'h enebourien ha da drec'hi warne, eur wech c'hoaz.

PREZEGEN JEZUZ WAR AR MENE

An eiz evurusted

War don : *Chiloet mat an tolenno.*

Evurus, eme hon Salver,
Ar re 'zo paour, an dud dister ;
Rak romantelez an nenno,
Hed an holl amzer o devo.

Evurus ar re 'zo tener,
Hag a vezo leun a zouster,
Bepred ea kenver o nesan ;
O loden a vo ar gwellan.

Evurus ar re o deus poan ;
Rak Doue denio e-unan,
Da zec'han d'eze o daero,
Ha d'o c'has gantan d'ar joaio.

Ar re o deus naon ha sec'hed,
'Vit ar justis, al lealded,
A vezo ive evurus,
'Vit eun amzer a vo padus.

Evurus ar re 'dens true,
Ouz an dud kez er baourante ;
O fec'hejo 'vo pardonet ;
D'ar re fallakr ne vezint ket.

Evurus ar re a zo pur,
A heur Doue, hi a zo zur,
Da welet ar gwir sklerijen,
Hag a bado da virviken.

Ar peuc'h bepret a vo roet
Dar re a vo dous a speret ;
Done he unan a rey de
An hano kaer a vugale.

Evurus ar re c'houzanvo,
Eus an dud fall dismeganso ;
Rak en romantelez a ne,
Eur plas 'defo en gwirione.

Enkeit ma vefet bars er bed,
C'houi, bugale, vo argaset,
Gant kasoni 'vit ma lezen ;
Mes me vo ganech da viken !

Eul Labourer.

FENTICELLOU

Ar C'hemenner

Ma 'z eo ar gemenerien holl
Evel ar re 'zo e Penn-Pol,
O va Doue ! nag a c'hevier
War an torchennou a glever !
N'em eus ket amzer da vont pell,
Rak-se 'ta, pa ne gavan gwel :
Te vo paeron d'ar c'hemenner,
Lusifer koz tad ar gevier.

J. C.

Perig ar Brabanser

— « Sell, Perig, deut out d'ar gear ? »
— « Deut ou avad d'ober-our bale. »
— « Pell pell out bet o veachi ? »
— « O ya, betek bro ar stered. »
— « Kalz trao kaer a teus gwelet ? »
— « Ya, c'houi lavar ! »
— « Lavar d'eomp eun dra bennak eus an trao
kaer a teus gwelet. »
— « O ya ! ha gant plijadur e lavarinn d'eoc'h,
pa her goulennit, meur a dra ha n'ho peus ket
gwelet marteze. »
— « Setu da vihana, ha sonj mad em eus c'hoaz, e
eamp-ni, martoloded, eat ken pell d'ar meaz, ma
tize gwern vras hon lestr an oabl steredennet. »
— « Oh ! hoho ! »
— « Ha petra ho pije great hoc'h-unan ? Ha me
pignat da veg ar vern vras evit gwelet an doa-
reou. »
— « Ha petra a teus gwelet, Perig ? »
— « A veac'h pignet, setu ma teuas al loar da
dremen a-zioc'h va fenn, ha me d'am godel prim

ha prim ha tenna va c'hontel ha krik krak dis-
kolpa eus al loar eun tam brao a bastel. »

— « Ha petra a teus great gantan ? »
— « E lakaat war ma bara. »
— « Mat edo da zibri ? »
— « Blaz an aman koz e ea gantan. »

J. C.

Janedig hag ar bellgomzerez

Janedig a zigouez e ti eun aotrou eus ker da
ginnig d'ezan viou (uo) hag aman.

— « Gortozit, eme an aotrou, ma komzin ouz
ma gwreg. » Hag hen o vont d'eur bellgomzerez
pe telefon, hag o koms dirak plankennig ar voest
vihan. — « Souezuz ! eme Janedig ; an aotrou-ze
e tle bezan eun tamm mad a zorsor anezan evit
bezan lakaet e wreg en eur armelig evel-se ! »

Yann ar benner-mein.

Eman Yann ha Jakez, bennerien (pikerien) vein,
oc'h ober en-dro d'eur voestad poulr da darza ar
rain. Ha Jakez o teurel ple eman gant Yann e
gorn-butun en e veg.

— « Petra, emean, kollet 'teus da skiant ? Teus
ket a zoug warlene e tarzaz eur voestad poulr
gant unan o vutuna hag e oe lazet dek war an
taol ! » — « Neb aon, eme Yan ; kement-all
n'hallfe ket digouezout aman pa n'omp nemet
daou. »

Ar medesin Kozlouzou hag al Louarn

Ar medesin Kozlouzou a zo eun tammig piz.
Galvet eo bet eun deiz, gant Pipi Louarn, an Nor-
man, d'ober war-dro e wreg a oa klavy fall.

— « Ha paeet e [vin, Pipi ? » eme Kozlouzou,
araok staga da zellet ouz ar glanvourez.

Hag al Louarn o vont d'e armel hag o tispaka
eur bilhet hanter-kant lur. — « Sed aman, emezan,
hag a vo d'ech, pe e vo paeet ma gwreg pe e vo
lazed ganeoc'h ! »

Eun nebeut goude e varvas ar plac'h kez hag an
doktor o tont da c'houlenn e arc'hant digant Pipi
Louarn.

— « N'ho peus ket paeet ma gwreg, eme
heman ! »

— « Gwir eo, eme Kozlouzou ; ma holl c'h-al-
loud am eus laket, avad, d'he yac'haat ; eus ma
gwella em eus laouzaet anezi d'he d'erc'hel e
buez ! »

— « Gant-se, eme ar Louarn, 'peus ket he lazet
kennebeut ! Hogen, lavaret em'foa rei d'ac'h han-
ter-kant lur, pe ho pije he fareet pe ho pije he
lazed. N'ho peus graet nag an eil nag egile. Ne
dlean gwenneg ebet d'ech ! »

KELEIER EUS AR BEG-OLL

Muntrez en Paris. — Daou dorfed a zo
c'hoarvezet neve-so en Paris, hag a lak ar polis
nec'het. N'haller ket goût piou an eus gret nag
an eil nag egile.

En torfed kentan 'zo bet lazet eul liver hanvet
Steinhel. Darn a gred eo bet lazet gant tud hag a
oa et da laerez d'ean paperou a dalvoudegez vras
deut d'ean abeurz mignoned da Felix Faure, pre-
zidant ar Republik gwechall.

En eil torfed 'zo bet lazet, e-kreiz an noz, en e
welle, eur bouc'hiz bras hanvet Remy, o chom en
kreiz Pariz. Laeret 'zo bet d'ean eur yalc'had mat
a arc'hant. Ar muntrez n'e ket kavet ive.

Clemenceau en Roaon. — Eun diskouezadeg
loened ha trao a labour douar o vean bet gret en
Roaon, Clemenceau ha Ruan, e gonsort, a deuas
o-daou da welet ar mér neve, hag a zo a-du gant
ar gouarnamant.

Bet 'zo prijou 'vit al loened ha « dekorasionou »
evit an dud.

Bet 'zo ive prejou bras ha prezegenno. Cle-
menceau an eus lavaret e oa evurus o welet Breiz
o tont d'ar Republik.

Evidon-me, 'vije gwel ganin gwelet ar Repu-
blik o tont maoc'h da Vreiz.

Mes ar Republik ha Clemenceau a ra fae war
Vreiz-Izel, rak, pa zonger da vat, Breiz-Izel n'e
ket hepken eur rann douar, nag eur boblad tud
gret diouz dibri hag evan, mes ive, diouz karet o
yez, o fe, o gizioù, ha diouz kement-se ar Re-
publik nag e fatron Clemenceau na reont forz
ebet.

Arók mont d'ar Republik, gortozomp eta, Bre-
toned, ma vo deut ar Republik davedomp, ma
devo doujet hon yez, hon gizioù, hon fe.

Ar « Tzar hag Edouard VII. — Impalaer Bro-
Saoz hag impalaer ar Rusi a zo et da 'n em welet
da Reval eur porz-mor eus ar Rusi.

Herve, Bro-Saoz a zo adarre kas kaout krog
war an Almagn ha kas hisan warni Frans hag ar
Rusi, 'vel m'he devoa hiset breman 'zo tri bla ar
Japon war ar Rusi. Mes da c'hout eo hag hen vo
chilaouet Edouard VII gant an hini an eus dal-
c'het d'ar Japon da bilat.

Eur skouer vad. — E ker Dunsford, en Iverzon,
ez eo bet adlaket en he chapel eur skeuden vur-
zudus eus ar Werc'hez a oa bet diskaret ha laket
a dammou gant an hugonoded. An tammou anezi
a oa bet dastumet ha miret epad meur a gantved
gant kristenien vad ar vro-ze.

KELEIER EUS AR VRO

BREIZ-UHEL

ROAON. — Prijou ar Vretoned. — Al loden
vras eus ar prijou a zo bet roet en Roaon a zo bet
et gant Normaned pe Bretoned a Vreiz-Uhel.
Koulskoude, deut 'zo bet ive unan bennak da
Vreiz-Izel ha zoken da Gerne ha da Dreger.

'Vit kóleed daou vla, Guillaume Lauranguer,
eus Pleuzal, an eus tapet eur priz a daou c'hant
lur ; Eugène Ar Gac, eus Rospez, an eus bet han-
ter-kant skoed.

'Vit kóleed tri bla, Connan, eus Pederneec, 'n
eus bet eur priz a daou c'hant hanter-kant lur.
'Vit anwarezed daou, tri bla, Connan 'n eus tapet
adarre eur priz a gant daou-ugent lur hag Ar
Gac, eus Rospez, eur priz a dregont skoed.

'Vit zaoud ouспен tri bla, Ar Gac an eus bet eur
priz a 200 lur.

'Vit zaoud leaz ouспен tri bla, Connan 'n eus
bet eur priz a 140 lur ; Robin, eus Keriti, an eus
bet 40 skoed.

'Vit anwarezed daou, tri bla, Connan an eus
bet 50 skoed ; Aurégan, eus Trebeuden, an eus
bet 40 skoed.

'Vit ar ras zaoud bihan, Ar Gac an eus bet
200 lur.

Evelse, Ar Gac, eus Rospez an eus bet, da vi-
hanan, 640 lur a brijou ; ha Connan, eus Pé-
derneec, 680 lur.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

BEAR. — Eur mér dispont. — En Bear 'zo
bet hanvet, diwar dorn an otro Kerguezec, eur
mér ha ne gavo ket er vro-man e bar, a drugare
Doue. An den-man, Razavet va gret anean, ken-
tan 'n eus gret, 'vit rei da c'hout piou oa, eo
gourc'hemen d'e gonsorted, an de ma 'n em gav-
jont, evit ar wech kentan, bodet er méri, dista-
gan ar c'hrusifi 'oe digaset di gant ar mér koz, pa
oa bet teulet eus al lezvarn a beuc'h.

Hini ane na zentas outan : kalon a-walc'h o
dije marvad da voti 'vit kas ar c'hrusifi ermeaz,
mes d'e gas o-unan n'o devoa ket.

Ar mér Razavet a ziskouezas neuze ne oa ket
eur gleb-dour bennak ; 'n eul losket eur malloz,
e savas, e krogas er c'hrusifi hag hen lakas e-
unan ermeaz.

Ha breman ? Breman, mér ha konsailherien
Bear 'zo savet eur bec'h pouner diwar o c'halon :
n'eman ken ar c'hrusifi 'us d'o fenn. Mes arruout
a rey c'hoaz !

GWENGAMP. — Ar presbitor. — Betek
breman, konsailherien Gwengamp n'o devoa gret
nemet terri an nor war ar presbitor koz hag ar
gwer war ar fenestrou. Breman 'maent o sonj da
rei anean da lakat lod eus pôtrez an eiz devez
warnunt.

Pa na ouzont ken petra d'ober gantan !...

Bue 'n den just, maro 'r pec'her,
'Den eus ar memes digemer ;
Pegen souezus divez !

Pa ve 'r fin an hosti torret,
Bezot hep nec'h ha start kredet,
'Zo kement 'n eun tam bruznet
Evel 'n eun hosti 'n e bez.

Ar Zakramant n'eo ket skaret,
Ar skeuden hepken 'zo rannet,
Mes n'eo nep tam bihanaet
Stum na ment ar Zakramant.

Setu aman bara 'n Ele,
Bâra 'r c'hristen ive hirie,
Mes gwir vara ar vugale,
N'eo ket da rei d'al loened.

En skeudenno 'oa diskouet,
Pa oa Isaac immolet,
Pa oa 'n oan paskal digaset,
Ar man roet d'hon tado.

Pastor mat, bara hon ine.
Ouzimp, Jezuz, bezet true,
Maget, miret ho pugale,
Ha gret d'imp oll gwelet eun de,
Ho madelez en Envo.

Pep tra ouzoc'h, pep tra c'hellet,
Ganac'h, aman, holl omp maget :
Hon gret, ouz ho tôl azeet,
Heritourien ha mignonet,
Ar sperejo evurus.

An droïdegez-man kaset da Groaz ar Vretoned
gant otro person Tremeven a zo bet gret eun
regont vïa so bennak gant an otro Auffret, beleg,
bet mestr-kelenner en kolaj Gwengamp.

Trugare da otro person Tremeven, en hano
lennerien Kroaz ar Vretoned. Trugare kalonek
en em hano ma unan, rak an otro Auffret — Doue
d'hen pardonio ! — a oa eur breur d'am mam.

Kalz a immou-all an evoa troet. Kalz a anaou-
degez am ije d'an nep o c'hasje d'in.

DIR-NA-DOR.

Aliou « Dihunamb » diwar-benn ar gantreerien

Dihunamb eo an dastumaden viziak koant a zo
renet ken reiz gant ar varzed Herriou ha Mellac
hag a ra kement a vad e Bro-Wened. Eman nive-
ren ar miz-man o paonez dont eus ar wash. E-
tonez an holl bennadon dudius, rimet pe gomz-
plen, a gaver warni, e kavan dreist-oll alioù eus
ar furan roet gant Loeiz Herriou d'e genvroiz
Gwened diwar-benn ar gantreerien. Pep bloaz,
emezan, e welomp o tigouezout e Breiz, war an
aouchou dreist-oll, diavezidi ne reont nemet tre-
men, nemet kantreal; kantreerien ne dint ken. Ar
re-ze, gwir eo a zigas o arc'hant d'hon bro hag
arabad e vije o dizarbenn. Ne dleomp ket, evit-se,
plega da heuilh o gizioù, gizioù o bro o deus evel
m'hon deus ni, Breiziz, gizioù hon bro-ni. Hon,
re-ni marteze n'int ket mat e pep tra ; gwelloc'h
int koulskoude eget re an estren ha ne dalv ket
ar boan troka.

Gant-se, e lec'h plega d'an diavezourien a deu
da weladenni Breiz, diskouezomp d'e ez omp
Bretoned hag e fell d'imp chom Bretoned, o ter-
c'hel d'hon gizioù, ha d'hon yez ha — kement-se
na harz ket da vezan dereat — o sevel hon penn
dirazo.

PA VER FORBANN!

D'am mignon Mabig Efflam.

Ne glevet ket, kenvreuer, eun hopaden skiltrus,
O trabuilhan du-hont gant eun hekleo garo
Shoulder ar meneioù a ra lezen hon bro?
Selaou!... Ne glevet ket?... Ar youc'h a zo
[klemmus!]

Me 'gav d'in ar youc'h-se, pa ziston ken c'houero.
A zo eur c'halvaden, eur beden ankenius,
Leusket gant hon Breudeur a zalc'h eur stourm
[poanuis]

*Vit distrei eus yez Breiz moren gri ar maro.

Daoust hag i ve gwannet dindan zam al labour,
Pa gleyomp galy o mouez o c'houlou hon zikour?
Daoust hag i ve tizet en-kreiz bec'h an emgann?

Ah! nag a garjemp-ni stourm ive 'n o c'hichen,
Gante harpan hon yez, gante sevel hon fenn,
Dirak ar Gall trubard! Allaz, pa ver forbann !

ROCHLAN.

Meulodi an est pe Sôn ar « vapeur »

'N em dastumet omp holl aman,
Ton ton,

Gant c'hoant vras da glevet kanan,
Ton ton,

Kanomp 'ta, mar plich, gant interest,
Breman pa eo klozet hon est,
Enor d'ar vapeur ha d'he mestr,
Ton ton tontaine ton ton.

D'ar marc'h-glaou enor da gentan,
Ton ton,

Ya en dro plen, hep 'n em drailhan,
Ton ton,

Eun daken dour, eun tammig glaou,
Klevfet e dikataka raou,
O tiskan prim ar bern d'an traou,
Ton ton tontaine ton ton.

Kanomp meulodi d'ar mestr mat,
Ton ton,

Laka ar « vapeur » da labourat,
Ton ton,

N'eman ket, 'vit gonit arc'hant,
O koll e est d'ar paizant,
Hag holl dioutan omp kontant,
Ton ton tontaine ton ton.

Kanomp enor d'ar voetaerien,
Ton ton,

Hanter vouget gant ar boultren,
Ton ton,

Nebeut a wersed gant vaporeio,
A ve gwelet war al leuriou,
'Ch ober ken sioul o deverio,
Ton ton tontaine ton ton.

Mil meulodi en pep amzer,
Ton ton,

Da baotr an dour ha d'an tomer,
Ton ton,

'Vel an daou gever ken nemeur
Da chom gant evez war al leur,
'Pad an de 'n kichen ar « vapeur »,
Ton ton tontaine ton ton.

An daou o trei an hijerez,
Ton ton,

A c'hone c'hoaz meuleudigez,
Ton ton,

Bet o deus poultr en o faso,
Ha 'bet gleb mat o rochedo,
'Tre ar rod hanvet galeo,
Ton ton tontaine ton ton.

Hag ar wersed, hep kalz a drouz,
Ton ton,

'Deus bet diahubet ar plouz,
Ton ton,

N'am eus ket klewet 'vid ar bla,
Ve lezet an toull da guiga,
Na bet trouz, tabut na netra,
Ton ton tontaine ton ton.

Ha d'ar merc'hed e kanin ive,
Ton ton,

P'o dije lipet o c'hafe,
Ton ton,

'G'h ent en dro evel kornigello ;
Ken e strake al linselio
A chache tenn ar merc'hejo,
Ton ton tontaine ton ton.

Ar wersed koz war ar bern plouz,
Ton ton,

Kalz a ve dioute jalous,
Ton ton,

Koulskoude e renkont poanian,
Ha mont alies 'n o gwasan
Da dapout piouz ha da vernian,
Ton ton tontaine ton ton.

Kanomp meulodi d'ar mestro,
Ton ton,

A bourve boed ha bannac'ho,
Ton ton,

Pa 'n em gava tenn al labour,
Digaset eur bannac'h « l'Amour »,
A rente d'imp kalz a zikour,
Ton ton tontaine ton ton.

Meulomp ar c'heginerezed,
Ton ton,

'Re d'imp eur bansion soagnet,
Ton ton,

Ah! fichan 'rent tammou rata,
Ken dilikat, ken mat ha tra,
Ne skvizemp ket o korfata,
Ton ton tontaine ton ton.

Tridala re hon c'halonig,
Ton ton,

Pa welemp jistr 'leiz ar bilig,
Ton ton,

Glaouen an est en hon c'haron
Re d'imp rei enor d'ar boeson,
Hep kammed bean direzon,
Ton ton tontaine ton ton.

'Velse bemde eus ar beure,
Ton ton,

E savemp yac'h eus hon gwele,
Ton ton,

Neuze, ken beo ha ken zeder,
Pa vijemp krog en hon micher,
'Remp holl adarre hon dever,
Ton ton tontaine ton ton.

Goulen a ran en fin ma sôn,
Ton ton,

Ouz Doue, a greiz ma c'haron,
Ton ton,

M'hon devo da bla ar bonheur,
Da gat eun est mat war hon leur,
Ha rond e rod gant ar « vapeur »,
Ton ton tontaine ton ton.

L. C.

E GWERZ PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (DIR-NA-DOR)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gwenneg ar frêjou-kas, da laret eo
nao gwenneg warnougant

al levra daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag neu sinet
gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skri-
van reiz ha skler ar brezoneg.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, bali Charner,
Sant-Briek.

GOULENNIT E Ti-Moulerez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEK, 27, bali Charner, SANT-BRIEK

An Aviel katolik, gant an aotrou abad BILLES, globeenn karton ha skeu- dennoù (gant ar frêjou-kas).....	4 real.
Prezegon war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneg.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneg.
Bue sant Anton a Badou.....	3
Pedennoùigou ha kelennadurez d'ar vugale.....	2
Merzerenti an Tad Perboar.....	1
Bue an Tad Perboar.....	1
Al lez.....	1
Meulodi al labourer.....	1
Gwerz sant Miltio.....	1
Gwerz sant Koner (skeudennet).....	1
An diaoul-paotr.....	1
Kdn an Istanded, Kentoc'h mervel. Peden ar vartoloded. Gwerz sant Kemo, hag all.....	1

Eun diskenn war ar priz evit am eur hini.

E GWERZ : Grammaire du
breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège
Notre-Dame, Guingamp.

DA BEP-HINI E DRA

Divaloan tra d'eun den eo distummi labour enn all evit lakat anezan, goude, ware hano. Ken divalo-all eo d'eun c'haner chench muzul eur zon ha kana anel herve e c'hoant hag e frouden.

Labour eur skrivaniar a zo d'ezan, d'ezan e-unan, ha den abed n'an eus gwir da gemer al labour-ze, da drei anezan evit kavout goude ar blijadur da laret en devo groet eun tol kaer bennak.

En tu-hont m'eo mezus ober kement-se, ar skrivaniar, perc'henn al labour, a c'hall 'n em gemer, dirak al lezarnioù ha lakat talvezout eno, enep d'al laer, e wirion-oberour (drois d'auteur).

Den eta n'hall laerez tra eun all, distummi muzul eur ganaouen. Eur ganaouen a dle bezan kanet evel m'eo groet. Eur ganaouen, evel eur bugel — herve Javar Prosper Proux — a dle bezan lezet da redek evel m'eo gwisket gant e vam, gwaz d'an nep n'hen kavio ket koant a-walc'h.

En eur gouel n'eus ket gwall-bell, eur mignon a lare d'in dirak eur poñr yaouank : — Sell, he-man an eus groet eur zon neve, unan c'houek, ma fôtr kez. . . Mar karez e vo kanet d'it. . .

Hag ar poñr yaouank a grogas.

Na souezet e chomis o klevet kana d'in, war eun ton-all ha troet eun toullad giriou, son Laouik *Bech d'ar Gallau*. Ar poñr yaouank a lare d'an holl e oa hounnez e zon ! En gwirione, elec'h lakat *Yan Arabad hag e vignon*, evel Laouik, ar poñr yaouank a lare er poz kentan : *E. N. hag e vignon*, hag ec'h astenne anei eus a daou pe dri gouplad rimet falloch 'vit welloch.

Prestik goude, an hevelep kaner a groge gant ar *Pesk-Ebrel*, hag elec'h laret evel an oberour : *Mar c'hoari troiou korantezus*, e lare : *Ha na mar c'hoari troiou korantezus*, o chench evel-se hed ar rim hag o rei d'ei, dre eno, eun ton difeson-tre ; rak an ton n'hall bezan reiz nemet ha henilhet mad e ve niver ha muzul ar rimadellou.

Kalz, maruze, a gavo penôs an dra-man an eus nebeud a dalvoudegez evit meur a zigare.

Da gentan, kement oberour a zo o deus arak sevel sonioù pouezet ha studiet mad o labour. Lakomp n'o dije ket ; o labour a zo d'ê, marvad ! Ouspen, anaoudegez ha diskadurez a-walc'h o deus, (zoken muioc'h evit an neb a zispenn o zoniou), evit gouzoutetra d'ober.

D'an eil, n'eo dleet da den gwiska dilhad eun all ; bezan vefont dalc'hamad pe re vihan, pe re vras d'ezan, ha kaer en devo c'hoari, dilhad eun all a lako anezan henvel ouz eur marmouz gwisket ; skanv e vo ennê evel eul louar-ven en eur zac'h !

En tu-hont c'hoaz, ar zoniou distummet n'o deus blaz abed ; henvel int ouz souben astennet, pe evaj badezet hag ar bobl na gar ken anê.

Ar pez ar spontusan hag a lak ac'hanomp d'en em zevel ar muian enep da ze, eo ne dle ket ar c'hentan c'hoant rimer peilhat, na drailha labour an nesan. E dra a zo da bep-hini, ha mar zo unan bennak hag a gav divalo gwelet eun oberour o tifenn e dra, divalooc'h c'hoaz e tle kavout eun den hag a deu da beilhât ha da zismantir tra eun all.

Krenv eo an danve hag an dachen a zo ledan a-walc'h d'an neb an eus c'hoant d'ober kanaouennou. . . Nemet ha c'hoant en defe da guz e spered goulou ha da gavout brud diwar goust ar re-all. Mes ar c'hoari-ze a zo eun nebeudig riskus ; rak abred pe diweat, e tiflip lorgen an aotro ha neuze e ve huchet harao war an azen !

Ar gwellan 'zo d'ober eo lezel e dra gant pep-hini ; neuze e chom en e renk hag en e renk ne ve dic'hizet den.

Ar zoniou, gwerziou ha kanaouennou a zo groet evit kana ; plijadur ar Varzed eo klevet kana o labourioù. Mes Barz abed koulskoude na gar gwelet daoubenni, na laerez d'ezan e zoniou, rak ar boan a ve bet gante a dalve a-walc'h bezan perc'henn d'ê. Mar n'o dije ar zoniou eun dalvoudegez anveet gant an holl — an darnvuian a ve bet kurûnet — ne vijent ket bet m'oulet, na sklabeet en-touez ar bobl.

Ra vont kanet eta gant an holl ar muian ar gwellan, mes ive ra vo lezet gante o gwiskamant hag o mouez evit na vefont biken dianzavet gant o zad.

A. DEETORY.

AR SKABEL

'Vel pep c'hoant al Breiz-Izel,
Ma chim' n'eus eur vantel,
Ha dind' n'eman ma skabel

Eur gador g.
Warni ec'h azeas ma zud
A holl-viskoaz, herve ar vrud.

Gant doujan, en eur dont en ti,
Bihan ha bras a zell outi,
'Naskont d'he stum ha d'he c'hozni.

He zreid skanv 'vel peder gwerzid,
Hag he diouvec'h tenriet iskwit,
'Ve warne na poultir na kefnid.

En ti n'eus pank na pres ebet
Ken lufr ha ken flour da welet,
Pa zav an tâu-flamm en oaled.

Gwechall, pa oa heo ma zad kun,
Goude gret e gornad butun,
War ar gador e re e hun ;

E ziaouarn war boull e galon,
Henvel 'vije ouz eur person,
Pe ouz eur roue war e dron.

Me ive, bep noz, goude koan,
War ar Skabel goz 'n em unan,
Ec'h azean ouz nerz an tâu ;

Ec'h azean 'tre he diouvec'h,
Pa zav ar vogeden d'an nec'h,
Ha pa gan ar skrilhed dinec'h.

Dre hira amzer ha forz sonjal,
Neuze dindan ar chiminal,
Me a glev mouezioù o trouzal.

« Eurus, eme, an den fidel,
A den bep noz, betek mervel,
D'azean er memes skabel. »

Kredi 'ra d'in bean neuze,
'Vel pa oan bugel 'n em c'hoaze
War barlen ar re am c'hare.

Pa vo d'in-me ar c'hloc'h sonet,
Da vont elec'h omp holl galvet,
'N em skabel 'vin c'hoaz azeet.

Eno serrin ma daoulagad,
Ha 'vel eur bugel, ma el mat,
'N em skabel a deuy d'am c'herc'hat.

Kenavo, skabelig gouloù,
Et e 'r barz, warlerc'h e dadon,
Da glask eur skaon-all en nenvou.

X. . .

Doue ha Breiz.

SANT ERWAN HAG AR C'HUDONED

En Kichen Maner Kervarzin damdestik da Landreger e oa eur c'houltred hag a oa leun a goulmed. D'ar c'houltred ma oa Ervoan bikanek e dad a hadas ed-du en park ar Groaz hag ar c'houltred a vije warnean dalc'hamad o tispenn, o tismant, pep-hini herdan ma helle.

Heloury ac'h eas eun de da welet doare ar park ha pa aruas eno, hen kavas goloet a goulmed a vilvern ken oa gronet ar park.

— « Penôs 'n em dizober eus al lapoused-man o defe bepred naon du. Ma stignfen laso-kroeg pe ma lakafen strakellerezed d'o spontan. Siouaz, o frio ken tano a glevo c'houez ar laso ha brud ifern ma strakellerezed e c'hoarfont gwap outi. Petra rafen eta eus al loenedigo-ze ken diskrupul, ken divergont ? »

Nag archer na lezen na denio a-ben anê. Red e vo d'in kas eur mesaer bihan. Ervoanik a denio ha keit ha ma vo aze, biken ne gredfont tostaat. »

Aru er ger, Heloury a laras (Ervoan) timat da bark ar Groaz da zifen . . .

— « Piou a glask no . . . »

— « Pion . . . »

— « Petra 'mo d'ober, tadig kez . . . »

— « O zarchoual, huchal warne . . . »

— « M . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

— « . . . »

STAD MANTRUS AR VRO

Tud yaouank o sevel

(Kendalc'h)

VIII. — Breiz eo bro an ilizou, bro ar c'halvriou, bro ar berejou, a jom dic'heot an hentchoù a gas d'ezo ; bro ar zent, bro ar pardonioù, bro ar Feiz.

Emile PIERRE, Plezidy,
(kentan priz).

Kroaz ar Vretoned

ROUMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
3 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù kelteiek.

RENERGEOEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBannoù-KONVERZ

An Aotrou TONNELLES, 27, ball Charner, a zigemer sez

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GRET.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekeraio a Vreiz.
FURNEZ AN GRET.

Dalc'hit hepred d'ho prezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het.
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'h d'li.
MILIN.

PARDON GWENGAMP

— Kaer e oa pardon Gwengamp ar bla-man ?
An dra-ze a c'houlenn tud ar gêr gant ar re 've
bet. Hag e klevet respont :
— Kaer ? Ya, eno oa zerret pobl.
— Kaer ? 'Me eun all. Ya, me gred, kurioziteou
ha stalioù eleiz ! ..
— Kaer ? 'Me eun all c'hoaz ; ya eun arc'heskob
a oa hag a ouie komz en brezonek.

Eun tam 'velse e c'hoarve : pep-hini a gemer ar
pardon war an tu a blij d'ean : darn a ra o fardon
gant ar foar, o werzan hag o prenan, darn-all o
c'hoareo o fri eus an eil korn d'egile ; darn-all, o
redek ar vali hag o tigeri o geno dirak potred an
astrakou ; darn-all oc'h evan en tavarnioù. Lod-all
ive a ra o fardon 'vel ma vije gret gwechall o vont
d'an iliz ha d'an ofisou, o hadnerzan o c'halon a
gristen hag a Vreton 'n eur govesaat, 'n eur go-
munian ha 'n eur daoulinan dindan bolzioù santel
an iliz 'lec'h ma 'z eo miret hekleo ken lies a beden
kalonek aboue n'oun ped kantved.

Di eo red mont da glask ar « pardon » rak an
iliz he deus miret d'ean war eun dro e dalvoudegez
kristen hag e stumm breton, an daou dra a ra ma
'z eo eur « pardon » ha nan eur gouel henvel ouz
ar gouelioù-all. Daoust m'an eus kollet pardon
Gwengamp lod eus e gaerder, hepred e santer
gant an blaz dudius an amzer goz, ha dleour eo a
ze d'an Iliz ha d'an Iliz hepken. En Iliz eman an
Itron-Varia-Wir-Zikour hag a zo hepred ar memes
hini. Hon daoulagad o paran warni a wel anei
evel m'he gwelas hon zud koz. Mes an Iliz he
deus miret ive endro d'ar pardon ar gizioù oa
gwechall : adalek an ofisou gret dindan lagad an
eskob, betek ar prosision, an tantajou, an ofe-
rennoù noz hag ar helerined sllabeet e-harz treid
ar Werc'hez, evel denvedigou gourveet o tiskwizan
gant o mesaer war evez oute, n'eus netra chanchet.
Ar memes kantikoù a glever, — da vihanan, en
iliz — ha ma chanch bep bla ar brezegeien, o
c'homzou a zo ar memes re. Ar pez a chancha-
mant a zo eo an dud a zo kaoz d'ean. N'ouzont
ken trawalc'h penôs eo en iliz eman ar pardon ; n'e
ket war ar vali, nag en hostalirioù. N'ouzont ken
penôs, ma zo eur c'houlz 'vit an aferou, 'zo eur
c'houlz-all 'vit ar pardon, p'eo gwit n'haller ket
bean war an dro er marc'had hag en iliz. Kalz a
ra o fardon 'n eur dremen, gant eur beden hag
eur pez daou wenneg laket prim ha prim en iliz
pe er porched, gant aou da nozout ouz o li-
jadur, ouz o marc'had, pe ouz o foar ; hogen,
ar c'hontrol a dleje bean ; pep-hini ober marc'had
pe foar en eur dremen, gant aou da nozout ouz e
bardon ; ha ma n'hall ket hirie rei trawalc'h eus e
amzer d'an Itron-Varia-Wir-Zikour, dont varc'hoaz
d'he gwelet, chom er prosision.

Ar zadorn, 'vel ma lavare ken brao prezege
hanter-noz, eo zul ar Werc'hez. Pep sadorn a zo
d'ei, mes sadorn Pardon Gwengamp a zo d'ei
kalz en tu-hont d'ar sadornioù-all. Pardon Gweng-
amp a deu bep bla 'vel eur jubile kinniget d'ar
Vretoned gant ar Werc'hez. D'ober petra rer e

jubile ? 'Vit gounit arc'hant ? 'Vit ebatat ? Nan,
'vit lakat da baran dirak daoulagad hon ine ar
skeud eus ar 'vue 'zo dreist houman, kemer an
tanva anei, ma vo ezetoc'h d'imp dibab hon hent
warzu hon gwir Vro, e kreiz tenvalijen ha trom-
plezonoù ar bed-man.

Ouspenn a zo c'hoaz en eur pardon 'vel pardon
Gwengamp. En Iliz, pa 'n em sonjont, ar Vreton-
ed a gav ive kentelioù a zigor d'eo o spered war
amzerioù kaer o bro Breiz hag a lak lorc'h enne
da vean Bretoned. Gret an dro d'an Iliz, pan
arnuet. Gwelet ar banielou hag ar skoedou livet,
warne gir hon duked : *A ma vie*. Ar vein a deu
aman da gomz ha da brezek : Ni, eme, hon deus
gwelet Breiz-Izel, pa oa brudet he furnez, he
skiant, he finvidigez ha nerz he brezh. Neuze e
teu hon c'halon da huavadi : O ! perak n'am eus
ket, me ive, gwelet kement-se ? Pegen kaer e tlee
bean « Pardon Gwengamp » an duked ? Ha war-
lerc'h huavadi e teu er spered ar mennoz-man :
Labouromp d'ober ken kaer ha gwechall, o vean
ken Breton ha ken kristen 'vel ma oa gwechall
sant Ervoan hag a bedas aman, an dukez Fran-
seza Amboas a re he chomaj e gwasked tourion
an iliz-man.

N'in ket eta ganac'h war ar vali, lennerien ger ;
n'am eus na c'hoant nag amzer ; chomomp er
pardon, da laret eo, chomomp en iliz pe wardro :
eno e kavfomp peadra da diduan hon spered ha da
vagan hon c'halon.

Pelerin an Itron-Varia-Wir-Zikour a gar chom
dindan bolzioù hec'h Iliz uhel, tenval ha leun a vis-
terioù zagr ; huavadennoù, hirvoudoù hon zadou
hag hon mammou en em dastum eno aboue meura
gantved hag a ra d'ar Werc'hez eur muzik ha na dav
ket, muzik an ineou ha ne ve klevet nemet gant an
ineou. Pelerin an Itron-Varia-Wir-Zikour a gar
pep men eus pave hec'h Iliz ; din int da vean
douget divezatec'h gant an Ele da bavean bar-
radoz ar Vretoned ; rak n'e ket ar glao nag an
amzer an eus o uzet, mes treid, daoulin ha dae-
rou ar Vretoned. Karout a ra c'hoaz pelerin gwir-
ion an Itron-Varia ar sklerijen moug a zisken
eus gwerinier hec'h Iliz ; ar mammou gant o bu-
gale vihan, o sevel o daoulagad tresek an de, a
wel Doue hag ar zent o vousec'hoarzin oute, hag ar
chapeled en o dorn, e chomont, en eur bedi, da
invori 'barz ar Vro-all, ken e sonjfed eman dija o
spered er Baradoz.

Mes pa zisken war ger tenvalijen an noz, ar pe-
lerin a zav, ha dindan bolzioù an ne steredennet,
e heuilh adreuz d'ar ruioù, gant eur golo en e
zorn, sklerijen ar Stereden veure. Dindan bolzioù
an Iliz ha bolzioù an noz e kuz, gant evez, leve-
nez e vue ; ne c'houl trouz ebet d'e ziouskouarn
nemet an hini a zil peuc'h en e greiz ; ne c'houl
sklerijen ebet d'e zaoulagad, nemet an hini a lak
splaander en e ine ; ne c'houl darempred ebet
gant an dud, ha da bep sorc'hen a ziavez, e res-
pont en e galon : Varc'hoaz ! Varc'hoaz !

Setu eta an noz o 'n em ledan diouz krec'h war
an douar. An Iliz a zo tenvalaet c'hoaz muioc'h ;
'n he zav dirak an oter vras, an Itron-Varia-Wir-
Zikour a skuilh stankoc'h stank, war he felerined,
eur c'hilzen dous leun a beuc'h. Mes souden,
sklerijen ha tan a strink dre holl, kaeroc'h 'vit

an de ; ermeaz, en diavez pep ti, er memez eur,
goleier a vilierou a lugern ive, hag en cablou, an
ele a hast alumni ar stered.

N'e ket mat e teufe an noz da glozan, zoken 'vit
eur pennad, eur pardon ken dudius ; an noz, evel
an de, a dle renti gloar ha meulodi d'an Hini
eman al loar evel eur skabel dindan he zreid ha
daouzek stereden oc'h ober he c'burunen.
Gant se, red eo ma vo an noz kaeroc'h c'hoaz
'vit an de.

Hirie an Anjeluz na gloz ket an de Kloc'h bras
an dukez Anna, goude bean zonet da guz-heol, a
zôn adarre pa deu noz, hag an dud, elec'h mont
da reuz, a dired d'an iliz. An eskob a zo gante ;
ar muzikou hag ar c'hantikou a respont en iliz
hag er ruioù da vouez skeltr kleier an tour ; eur
voubou leun a levnez a zizarben sioulder an noz
hag a lavar d'ei : Aman ne gousker ket ! Setu ar
skeudennou zagr o vont ermeaz, douget gant
gwersed en gwenn, ar banielou, ar c'hrozioù
arc'hant hag aour, an Itron-Varia-Wir-Zikour war
dioukioù he bugale... Setu ar prosision niverus
meurbed dispak kaer a-dreus d'ar ruioù... Setu,
war al leur-ger, an tri dantad o flaminan, ar bobl
bodel tro-dro, ha gant pep kristen eur golo ; ha
dreist pennou an dud, dreist ar goleier, gant he
Mabig ouz he brezh, an Itron-Varia-Wir-Zikour...
Warzu d'ei an holl mammou, kalz an o bugali-
goù ive ouz o brezh, a dro o zellou hag o c'ha-
lonou, epad ma strink, gant o feden, betek an ne,
teodou tan an tri dantad bras.

Kaerol tol-lagad evit an dud hag evit an ele !

Dizroet eo an Itron-Varia war he zron en he
iliz, sederoc'h breman, p'he deus gret eun dro
etouez he bugale. Ar re-man laouenoc'h ha bevoc'h
ive, 'vit heuilh pen-da-ben ar c'hiz koz ken dous
da Werc'hez Gwengamp, a zigor levr ar c'han-
tikou brezonek a blij d'ei ar muian, hag o deus
distonet ken lies a wech diudan bolzioù hec'h
iliz : *Ni ho salud, Stereden vor, Ni ho salud,*
Rouanez an Ele. An hent a ya da Wengamp,
Gourc'hemennoù Doue, ha kantik ar Baradoz,
kaerau tra a rento meulodi da galon ha da spered
Breiz-Izel.

Pa dav mouezioù an dud hag an ograou, en
iliz lufr ha skedus gant mil ha mil a c'holeier, e
tisken eur peuc'h bras. Eur prezege breton a bign
er gador. Na pebez prezege ! Iliz Gwengamp, en
eur-man, a zo uhel ha ledan meurbed, ken uhel
ken ma tap betek an ne, betek zeri enni Bretoned
evurus ar bed-all ; ken ledan, ken ma tap eus an
eil korn a Vreiz d'egile. Breiz-Izel a-bez a zo
enni, Breiz gwechall, Breiz breman... Ar beleg
eus lein ar gador, a wel en-dro d'ea Breiz
bepred yaouank, hepred beo, hag unanet dre eur
chaden kuzet eur penn anei en anzerioù gwechall
hag ar penn-all en ne. Pebez komzou a strink
eus e galon, 'vit gallout tapout gante ledander,
donder hag uhelder ar pez a gaer a wel dirak e
zaoulagad !

N'eus netra a hallfe, 'vel 'zo dleet, peurglozan eur
pred ken dudius, nemet an oferen hag ar gomu-
nion. Aman pep pelerin gwirion a zigemer e re-
kompan ; kalon ouz kalon gant Doue hag an
Itron-Varia-Wir-Zikour, e tanva joa dreist-muzul
ar Baradoz, eur c'hinaouad eus mel an ele kinni-
get d'ean gant e Vamm.

Setu ma komzet d'ac'h eus pardon Gwengamp,

Gizioù ha lavariou kristen ar Vretoned

Ar Breton kristen en deus eur respet bras evit ar paour, hag a oar rei d'ezan an aluzen en eun doare dereat. Gouzout a ra gwelet Jezuz-Krist dindan gwiskamant dister ha fall ar paour ha renta d'ezan dindan ar gwiskamant-se an enor a zo dleet. Evel-se, nepret ne welot anezan o teurel e aluzen d'ar paour. « D'ar c'hi, emezan, e vez taolet e damm ; mes d'ar paour e vez lakeat an aluzen en e zourn. »

Ne welot ket anezan ken nebeut o roi an aluzen d'ar paour dre ar prenestr. « An dra-ze, eme ar Breton kristen, ne deo ket dereat a-walc'h. Oc'h ober evel-se, e tiskouesfemp kaout aon da goll eur gammed bennak gant ar paour o vont betek toull an nor da gas d'ezan hon aluzen. Ha neuze, dre an nor ez a hag e teu an dud-all ; dre an nor ez eomp da zigemeret hor c'herent, hor mignonned, an holl : deomp ivez dre an nor da gavout ar paour, a zo kement dirak Doue hag an dud-all ; an hevelep badiziant a zo war e benn, hag evel-se ken din eo hag ar gristenien-all da veza respetet. »

Ar vugale a wel ober evel-se, a glev an abegou e harp o zad hag o mamm warno evit ober evel-se, hag, eun deiz, d'o zro, pa vezint mistri, e raint ivez evel-se. Lavaromp gwell, ober a reont brema evel-se ; rak, hervez eur c'hiz vat-all, an tad hag ar vamm breton a ra o aluzennou, kement ha ma c'hellont, dre zaouarn o bugale, evit deski anezo abret da veza mat oc'h ar paour, da ranna gant an dud ezommek ar pez o deus a re. Ha neuze, dre garantez evit o bugale eo e lakeont anezo da gas an aluzen d'ar paour : esper o deus e roio hema e vennoz d'ar vugaligou hag e tougo ar bennoz-se chans vat d'ezo.

Eur c'hiz vat-all.

A-raok gwiska eur c'hrez fresk, eur roched, eun hiviz, hor Bretoned kristen ne vankont morse da ober sin ar groaz ha da lavaret eur bedennig bennak evel houma : « Va Doue, roit d'in ar c'hras da dremen hep pec'hed hag e yec'hed an holl amzer ma vezo ar c'hrez-ma war va c'horf. »

Eur vamm na vanko morse ken nebeut, pa 'z ay da wiska e roched pe he hiviz d'he bugelig, da ober sin ar groaz warnezan, abarz lakeat d'ezan ar c'hrez-se.

Setu ama c'hoaz.

Pa 'z a hon tud yaouank hag hor paotredou da neu, petra a reont, da ober, o vont er mor ? Souba o biz er mor hag ober sin ar groaz gantan evel gant dour benniget. Dre eno en em armont a enep an danjer ; dre eno e santellaont ar walc'haden ez eont da ober d'o c'horf, hag an diduel a gomerint er memes amzer.

Eur c'hiz-all.

Pa zifern eun den, eme ar c'hiz da lavaret d'ezan : « Doue r'ho sikouro ! » Mar deo eur bugel bihan, e leverer : « Doue r'ho pennigo ! » Ar siferner a respont : « Bennoz Doue d'eo'c'h ! » Eur c'hiz-all : houma a zell hepken ouz ar merc'hed.

E kalz a leac'hion eme ar c'hiz gant ar merc'hed yaouank, ha zoken gant ar gwraez, da zougen eur groaz war boull o c'halon pa vent en o c'haer. Lod o deus eur groaz aour, lod eur groaz arc'hant, lod eur groaz a izelloc'h priz. El leac'hion ma komzan anezo ne gonter ket e ve eur plac'h yaouank gwisket a-walc'h, ma n'he deus ket ar groaz-se o lugerni war boull he c'halon.

Ha pez a zo sur, ar c'hiz-se a zo eur c'hiz vreo ha mat.

Eur c'hiz vreo : Netra na ra gwell war boull galon eur verc'h yaouank — ha war boull galon an holl verc'hed, — eget eur groaz. Evel koantoc'h e teu da veza dre eno, mar en deus Doue roet d'ezo ar c'hened.

Mes dreist-oll, ar groaz so, benniget ha santellaet dre bedennou an Iliz, a raio vad d'ez : he dionall a raio en danjerou ; he sklerijenna hag he c'hrenvaat a raio enep pep tromplerez, pep touellerez ; miret a raio outi da goueza er pec'hed. Ar gwel eus he c'hoaz a vezo a-walc'h evit he c'henerzi a-enep pep tentasion. O penaos e c'houfe-hi, o velet he c'hoaz, asanti biken da ober netra hag a rafe dismegans d'ar groaz venniget-se !

Eur c'hiz-all.

A-raok boull'ha eun dorz vata, c'honi a welo atao hor Bretoned kristen oc'h ober sin ar groaz warnezi gant ar gontel. Se a zo evit he benniga, evit he zantellaat, hag evit ma raio evel-se d'hor c'horf ar vad a zo dleet.

It da glask gizioù ar sort-se e-touez keariz, nak e-touez an dud a zeskadurez ! Mez o defe o kaout kement a fizianz e sin ar groaz, oc'h ober sin ar groaz ken alies, betek war ar bara a zebront ! Ha koulskoude, gant piou eme ama ar wirionez ? Piou a heuilh ama lezennou ar furnez, pe hor Bretoned mat ha kristen ar meaz, pe hon tud a zeskadurez ? An Iliz santel, ha na deu-hi ket da venniga ha da zantellaat dre zin ar groaz ha dre ar beden ar bara, ar gwin, an dour ha traou-all ? It da eun iliz, gwelit ar beleg o lavaret e oferen, oc'h ober eur vadiziant, eun eured, dour benniget, hag all, hag ho taoulagad ho kelenno. Ha perak kement a zinou ar groaz hag a bedennou war an traou-ze holl ? Evit lammet diwarno binim Satan. Her gouzout a dlefec'h, an holl draou krouet a zo bet saotret, stlabezet dre ar pec'hed ; an drougpered en deus evel glaouret warno holl hag o ampoezonnet. Setu perak an holl grouadurien a zo ken danjerus evidomp, a deu ken eas da veza penn-kaoz a bec'hed evit hon ene, penn-kaoz a glenvejou evit hor c'horf ! Ya, binim an diaoul a zo konezet warno hag en deus o c'hontamet. Hogen, sin ar groaz hag ar beden o deus ar galloud, an nerz da lammet kwit ar binim-ze, d'o netaat, d'o renta dizanjer ha yec'hed hag evit hon ene hag evit hor c'horf. Setu perak an Iliz santel, sklerijennet ha renet gant spered Doue, a vennig pep tra dre zin ar groaz ha dre ar beden, hag a ro ali d'he holl bugale da ober evelti. Ar Breton kristen a zent ouz e Vamm zantel ha dre eno ouz Doue ; an den a zeskadurez alies na ra ket. Pe-hini eus an daou en deus ama ar muia spered hag ar vrasa furnez ? Unan anezo en deus spered Jezuz-Krist, spered ar zent, spered kement en em zavete ; egile en deus spered ar bed, eur spered *avelek*, spered ar re a ya da heul Satan war an hent a gas d'an ifern.

Tennet eus Feiz ha Breiz koz gant

PLUENZIR.

SANT ERVOAN HELOURI

advokad ar Vretoned

Jezuz

A belec'h e teuez-te, Ervoan Helouri ?

Sant Ervoan

Bet oun oc'h ober eun dro en Breiz, otro, hag em eus gwelet gant kalz a zispiljadur, kredet, 'n eus gret ma Breiz-Izel eun tam koac'h adarre. Deut oun eta d'ho pedi, aburz holl zent breton ar baradoz. O Otro ! daoust ha dilezet ho pefe Breiz-Izel ? Otro ! otro, an dour a deu 'n em daoulagad, pa zonzan ho pefe dizroet ho zellou diwar ma bro.

Jezuz

Ervoan, ma mignon, ter out 'n ez komzou ! Pegoulz e teus klevet lavaret am ije me dilezet krouadur ebet da gentan ?

Sant Ervoan.

Neuze 'ta, otro, eo Breiz-Izel a dilez ac'hanoc'h ?

Jezuz

Breiz-Izel n'e ket yen c'hoaz, mes klouar eo, hag eun dra glouar na blij ket d'in.

Sant Ervoan

Ho pet trus oute, Otro, da vihanan abalamour d'an amzer dremenet. Sant Briek a oa Breton ; sant Taal a oa Breton ; sant Kaourantin a oa Breton ; sant Gweltaz a oa Breton ; sant Gwennole a oa Breton ; sant Samson a oa Breton...

Jezuz

Ha sant Ervoan Helouri eta, daoust ha ne oa ket Breton ?

Sant Ervoan

Ot eo ! otro ! Breton a greiz kalon.

Jezuz

Ya, kalz a Vretoned gwechall o deus goneet ar Baradoz ; mes ar re 'zo breman na gerzont ket war o rondou.

Sant Ervoan

Koulskoude, otro, me glev bepred kanan en o zouez kantik ar Baradoz.

Jezuz

Ya, Ervoan, mes na lakont ket o oberou e skouer gant o c'hantikou. O c'hantikou a zo kaer, mes o oberou a zo dister.

Sant Ervoan

Neuze 'ta e rankin gwelet ma Breiz o vont da goll, me hag am eus bet labourer kement eviti ? Breman e hallan hen laret, pa 'm eus bet digant ma mestr ma c'hurunen.

Jezuz

Paour kez Ervoan, bepred e karez da Vreiz dismeganz 'vel 'zo bet gret d'it eno ?

Sant Ervoan

Otro ker, ha c'honi, daoust ha ne zalchet ket da garet an dud, ha koulskoude...

Jezuz

Penôs 'zo bet kredet lakat en Landreger unan bennak ez-eun d'am mignon Ervoan ken madoberus ha ken galloudus ?

Sant Ervoan

Otro ker, n'e ket d'in-me, siouaz, d'ac'h-lu 'zo bet gret dismeganz eno ?

Jezuz

Tregeriz ober fae evelse war o zant, war o gwellan skoazel, leun e zorn a vuzudou en o c'henver ?

Sant Ervoan

Otro ker, an dud a reas kalz gwasoc'h d'ac'h pa lakjont Barabas da drec'hi warnoc'h, ha koulskoude, oc'h chomet karantezus en o c'henver.

Jezuz

Terri ar gwer hag an dorjoù war iliz ma mignon Ervoan !

Sant Ervoan

Hoc'h iliz c'honi eo muioch c'hoaz, otro !

Jezuz

Ervoan, 'n ez plas, me 'drofe kein d'ar Vretoned !

Sant Ervoan

Ya, otro ; troet kein d'an dud ha me droo kein d'ar Vretoned.

Jezuz

Allas, paour kez Ervoan, zant out ha zant e vi ; birviken n'halli ober droug ebet, na pa ve d'eur c'hoennenn... Pa ne bed ket ar Vretoned ac'hanon, te a bed evite.

Sant Ervoan

A ! otro ! Breman zouden e c'halven zent koz Breiz-Izel da zifenn o c'hoaz. Mes n'am eus ezom evit gounit ma frouez, nemet lakat dirakoc'h ho skouer ho-unan war an douar. Bet oc'h ezommek, bevet ho peus, marvet oc'h e-kreiz ar poanioù krisan, evit an dud. N'hallet ket nac'h otro ker, rak, anez ar pez ho peus gret, ne vijen ket me aman. Bepred e talc'het da bardoni ana ha da zigeri d'e dor ho paradoz.

Penôs a rin-me nemet heuilh ho skouer bepred, pardoni ive d'am Bretoned, ha zikour ane da zont d'ar Baradoz?

Jezuz

Gwelet a rean 'm oa grêt eun tol fail, p'am oa digoret dor ar Baradoz dirak eun advokad.
Petra fell d'it 'ta, Ervoan, evit da Vretoned?

Sant Ervoan

Eun dra hepken, otro trugarezus. Kreski enne karante Doue ha karante o Bro, rak evel ma lavare ar re goz eus du-man...

Jezuz

Ar Brezoneg hag ar Feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.

Sant Ervoan

Deut eo ganac'h, ma otro ker!

Jezuz

Ya, Ervoan, mes ar penn-kaoz mac'h a Breiz da goll eo just dre m'o deus gret an disparti.

Sant Ervoan

Lezen an disparti?

Jezuz

An disparti gret er galon a zo gwasoc'h 'vit an disparti gret er Gamb. Hogen ar Vretoned o deus gret en o c'halon an disparti etre ar Fe hag ar Brezoneg. Ne gaver ken a dud rik war an douar, Ervoan, nemet hanter-tud. Ha gant se, kristenien a zo hag a gav mat ar Fe, mes e c'houllont : Perak ar Brezoneg? Eus an tu-all, Bretoned a zo hag a gav mat ar Brezoneg, mes e c'houllont : Perak ar Relijion?

Sant Ervoan

Ha koulskoude, Otro, c'honi ho peus krouet ar Brezoneg hag ar Vretoned, koulz hag ar Relijion?

Jezuz

Ar wirione a larez, Ervoan.

Sant Ervoan

Neuze 'ta eo ganac'h eman alc'houe ar Brezoneg koulz hag alc'houe ar Fe.

Jezuz

Ya, Ervoan; n'e ket ar memes alc'houe, mes ganin emañt o daou.

Sant Ervoan

Neuze 'ta, an den na die ket 'n em rannan en daou pe dri bez, dispartian 'n e galon ar Brezoneg hag ar Relijion. An den a die klask pep gwirione diwar ho torn ha bean unan en e spered hag en e oberou, evel ma 'z oc'h c'honi unan.

Jezuz

Ya, Ervoan, 'te a veve evelse hag a oar penôs eo bevan. 'Te a ouie klask ha digemet pep gwirione ha lakat ane da greski an eil diouz eben, ober unan gante.

Sant Ervoan

Ennoc'h, Otro, e kavis pep gwirione hag e kavis nerz a-walc'h d'o skoulman ha d'o unani.

Mes hepoc'h, Otro, spered an den n'eus ket a sklerijen da welet frank a-walc'h gwirione ebet, kement ha kaout an nerz d'ober unan gante holl, ha, goude, gallont o bevan. Otro, me ho ped gret ma tenio ar Vretoned da vean unanet asambles er wirione, feal d'ac'h ha feal d'o bro.

Jezuz

Bez dinec'h, Ervoan. Breiz an ne he deus c'hoaz, drezout, goneet he froses da Vreiz an douar.

P...

TANTAD SANT PER EN KERZOLEZ

War don : Ael an Otro.

Sonj mat a vo eus an tantet,
En-tal Kerzolez a zo bet
D'ar sadori pa oa kloz an de ;
Rak haer e oa en gwirione.

Pep-hini, ha bras ha bihan,
'Neus digaset 'vit ober tan,
E fagoden gant levezeg ;
Trugare 'vit o madelez!

Sant Per an nevo sonj oute,
Ha dreist-oll eus ar vugale ;
Ar rummad-se, me hen asar,
'Neus bet ar muian plijadur.

Eus pep karter oa deud an dud,
Rak dre-oll oa redet ar vrud
'Vije da dibri, da evan ;
Ha se blij da galz dre duman.

Pa oa klozet mat an danve,
Ha gret eur bern bras dioute.
Gwreg ar Bourc'hiz 'zo arnet,
Hag an tan neuze 'zo kroget.

Eun tan skler, eur gwir dan a joa,
Nan eus ket gwelet kaeroc'h tra ;
Mes eus ar poanion kemeret
Bremason e vefer peet.

Bean 'zo da c'houz pep-hini,
Hag hini dous, ha sant Pipi ;
Eun dudi eo gwelet ane,
O lonkan jistr, goude, kafe.

Bean e oa c'hoaz jigoden,
Da re gare eus ar vanden ;
Nan eus ket ezom da laret,
Goude kement-se oa kanet.

An Anjelus war an ton bras,
Evel n'eo bet klevet biskoaz,
An holl ac'h e eus o gwellan,
Ha darn zoken betek mougan.

Meulodi kalz a zo dleet
D'eur soudart koz da vean bet
Eur sonj vat evit ar Werc'hez,
Hag ouz sant Per, en Kerzolez.

Sur mat ar Sant, eus an nenno,
An eus bet klevet hou moejo,
Rak bouzar e vije, me gret,
Ma n'en dije ket hon c'hlevet.

Soniou, kantikou 'zo kanet,
Kenkoulz gant merc'hat ha potret ;
Hag Even, ar C'hoz Labourer,
'Neus kanet son Mahlin mevier.

Trugare sur a zo dleet
Ha d'ar Bourc'hiz ha d'e bried
Demeus o holl vadelezo ;
Doue ha sant Per d'o feo!

Dalc'homp bepred d'hou gizio koz,
Ha bep bla, pa vezo ser-noz,
Demp gant plijadur ha furnez,
Da ober tantet Kerzolez!

Y.-M. S.,
Koz Labourer.

KELIER EUS AR VRO

GWENGAMP. — Klenned war ar moc'h. — En koste Gwengamp ha Boulvriak, ar c'hlenved a ra kalz a rivin etouez ar moc'h : ar pour (rouget, en galleg) a zo eur c'hlenved stagus ha diremed, koulz laret. Koulskoude Pasteur, gwechall, an evoa kavet louzou da vaksinan ar moc'h, da harz ar c'hlenved d'e, pe d'e barean.

Mes ouспен, eo red ive gwalc'hi ar c'hreier gant dour ennan tri dre gant a « lyzol », prenet en apotikéri.

Prijou. — Prijou kolaj an Itron-Varia en Gwengamp a zo laket an 20 a viz gouere. An otro Pennec, vikel-vras, a vo er penn ane.

KERIEN. — Ar c'hurun. — Herve eur c'helo digaset dilun eus Larnen, ar c'hurun a zo bet kouset en eur park ha lazet 9 a zaoud. Ar vesaerez eo bet rostet he bleo ha ken fourmet eo bet ma 'deus kollet he spered.

KINTIN. — Kanvou. — Hon mignon Gwellas o vean o paouez koll eur voereb koz d'ean an dimezel Coroller, oajet a 88 vla, e c'houlenomp eviti pedennou hon lennerien ha, dreist holl, pedennou bugale Breuriez ar Brezoneg, rak Gwel-tas a zo penn-rener Breuriez ar Brezoneg hag hen an eus zikouret, etouez ar re gentan, kas ar Vreuriezh war arôk. Hogen, e voereb koz he devoa douget anean da zeski ar Brezoneg ha d'hen skri-

van. D'eur Vretoned vat evelen omp dleourien, da vihanan, eus hon fedennou, ha d'an otro Gwel-tas ha d'e dud, eus hon gwellan gourc'hemennoù a genganv.

LANDEGER. — Gouel ar merc'hed kristen. — Breuriez ar Merc'hed kristen a zo et ar zun all da bardonan da Landreger, renet gant an otro Pennec, vikel-vras hag an eus gret d'e eur gaer a brezegen vrezonek.

PLERANEK. — Eur muntrer. — An 28 a viz ebrel, Henry Théodore, eus Plourivo, mevel en Loguivi-Pleranek a lazaz gant eun tenn fuzuilh en he fenn eur plac'h pemzek vla, Victorine Bonniot, abalamour n'houle ket ar plac'hig fur rei penn d'ean.

Barnet eo bet ar zun dremenet en Sant-Briek, da 10 vla galeou ha 10 vla da chom ermeaz ar vro.

PONTREO. — Pardon. — Ar zadorn, 18 eus ar miz-man, en em gavo prosizion an Itron-Varia-Fantano. « Mar be sklaer holz an euvo, ruio Pontreo vo ive : En noz-ze gant o goloio e voint skler evel an de. » Deut d'hen gwelet, Breiz-Izeliz, hag ho po eun tanva euz ma eo brao ar Baradoz.

ROSTREN. — Kongsailher torret. — An otro Barbier, hanvet, eur bla vo breman d'an 28 a viz gouere, kongsailher jeneral 'vit kanton Rostren, a zo o paouez bean torret dre ne oa ket bet gwirion ar votadeg. An otro Barbier a oa ru. An otro Cazin d'Honinectun, mér Glomel, a vo, marvad, hanvet en e lec'h.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERIC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERIC, keleuner Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (DIR-NA-DOR)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gweneg ar frejou-kas, da laret eo
nao gweneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag hen sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivvan reiz ha sklér ar brezoneg.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, bali Charner, Sant-Briek.

GOULENNIT

E Ti-Moulez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Avel katolik, gant an aotrou abad BILIER, goloenn kartons ha skeudennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegen iwar Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gweneg.
Hent ar Groaz.....	3 gweneg.
Buc sant Anton a Badou.....	3
Pedennouigoù ha kelennadurez d'ar vugale.....	2
Merserenti an Tad Perboar.....	1
Buc an Tad Perboar.....	1
Al lez.....	1
Meulodi al labourer.....	1
Gwerz sant Miltio.....	1
Gwerz sant Koneri (skeudennet).....	1
An diaoul-paotr.....	1
Eân an Islanded, Kentoc'h mervel. Peden ar vartoloded, Gwerz sant Kemo, hag all.....	1 daou evit.

Eun diskenn war ar priz evit am eur hini.

ha, daoust da ze, n'ouzo'h netra eus pardon ar bla-man. Eun hunvre 'm eus gret hag e kavan kri ne ve ket gwir ma hunvre. Pardon ar bla-man, petra a vanke d'ean 'vit bean henvel ouz ma hunvre ! Daoust ha ne oa ket oc'h ober anean an Otro Dubourg, an arc'heskob breton, hag e larfen dioutan, ma ne vije ket eur Pab en Rom, e vije hen Pab ar Vretoned ?

Daoust ha ne oa ket kaer an iliz, kaer an ofisou ? Daoust ha n'eus ket bet a brosision hag a danta-jou ? An amzer 'zo bet ive eus ar c'haeran, petra fell ouспен ?

— Ya ; bet eo kaer pep tra, mes kaeroc'h c'hoaz e oa ma hunvre... Perak ? Laret d'in c'houi, Bretoned diwar ar meaz, tadou, mammou hag a zo barrek da vont, pa vo red, da Wengamp war ho treid noaz hag ar chapellet en ho torn, laret d'in hag-en 'n eus ket damantet ho kalon, disadorn da noz, o welet hag o klevet ar pez an eus gwelet ha klevet kalz a dud war hent ar prosision ? Laret eo maro prosision pardon Gwengamp, piou a gredfe ? Keit ma vo eur fulen a fe en kalon kant Breton a Vreiz, prosision pardon Gwengamp na varvo ket. Mes, 'vit laret ar wirione, nag a *denvalijen hudur* kas mougan ar wazig tan-ze a rede disadorn da noz adreuz da ruiou Gwengamp ! Nag a bec'hejou kas mougan ar pedennou ! Nag a waperez kas lakat tal ar gristenien da ruian ! Nak a gasoni kas ober d'e krenan ! En daou du d'e, aman du-hont, stank ha stank, spered an droug an evoa kaset e vevelien da sternian an hent.

Laret d'in c'hoaz ive, tudou diwar ar meaz, kustum d'enori ar Werc'hez, evel ma ouzo'h, en yez koz ho tadou, laret d'in hag-en n'ho poa ket kavet distum, trist, divlaz ha divalo ar beden-ze a zave pen-da-ben ha dre-holl endro d'ac'h, kanet en galleg ? Ma zo Gwengampiz en Gwengamp da ze ha da nozvez pardon an Itron-Varia-Wir-Zikour, daoust ha n'e ket 'vit rei digemer da holl Vretoned Breiz-Izel en o iliz, en o ruiou, en o zier ? Ha daoust ha hennez eo an digemer a zo dleet d'e ? Gwengampiz, an enor bras ho peus da gaout eur Werc'hez hag a zo anaveat ha brudet en Breiz a-bez, eun iliz hag a zo darempredet gant tud a Vreiz a-bez, da zevez he fardon ; mes gout ouzo'h ive an eus ar Vretoned-ze a deu davedoc'h eur yez ; c'houi hoc'h unan, daoust ha n'oc'h ket Bretoned ? Nozvez ho pardon, ça vihanan, en ho ruiou, evel ma rer en hoc'h iliz, kanet eta brezoneg, yez ar re a digas d'ac'h hirie o arc'hant, a dra zur, mes, dreist holl, skouer ha c'houez vat o fe kalonek !

Hen laret am eus, eul levezeg eo d'in hen had-laret adarre : dindan bolziou an iliz, eno e kaver gwir stumm ar pardon koz, gant e liou, e vlaz, e dremm dudius ha breton. Eno ni glevas kantikou Breiz-Izel ; eno an *hini gos* a drec'has war an hini yaouank — a zo galleg ; — eno ineen ar Vretoned a hallas, d'o zro, komz ha kanan d'o Gwerc'hez. Klevet a rejont an arc'heskob oc'h ober en brezoneg eur brezegen.

— Eun arc'heskob o sarmon en brezoneg, eme unan-goz ; ze 'zo eur burzud gret gant an Itron-Varia-Wir-Zikour ! — Gant pegement a stad e oe chilaouet an otro Dubourg ! 'N evoa ket a doan o veuli en brezoneg an Itron-Varia. Setu eur skouer hag eur gentel d'ac'h, Gwengampiz.

Warlerc'h an otro Dubourg, an otro Guillou, person ar C'houerc'hed, a brezegas ive en brezoneg. Dleet e oa an enor-ze d'an otro Guillou hag ar blijadur-ze d'ar Werc'hez, rak ne glev ket, bep dalc'h, a brezoneg evel heman. Me garje bean gallet lakat aman komzou an otro Dubourg ha re an otro Guillou pen-da-ben ; anez gallout, hen ober, ne lakiu gir ebet, rak o distumman n'houl-lan ket.

Pa zonas hanter-noz, e pignas ar beleg ouz an ôter, ha kerkent, beleien-all a grogas da rei da gomunian. Kanet 'oe ar *Gredo*, roet bennoz ar Zakramant ; neuze oe kanet ive, vel bep bla, *kantik*

ar baradoz. Ma oa kalz a dud skwiz ha na ganent ket, unan a oa, da vihanan, eur plac'h, hag a oa ganti, korf ha kalon. Vad a re he c'hlevet, ken sklintin he mouez ha leun a fe nerzus. N'ouzon ket piou eo, mes ma tigoue d'ei lenn ar gircioman, gwel a ze : henvel ouz eun estig, diboaniet ha sederact he devo bet kalon eur Breton.

Kenavo breman, pardon Gwengamp ! Bennoz ma holl galon ha ma holl garante da vean ganit ha gant kement a bleustr ac'hanout, gwir gristenien ha gwir Vretoned !

DIR-NA-DOR.

TOG JANI

Chom a reas mam Jani batet war an treujou o welet eur plac'hig, 'n he zav war ar skaoen, dirak ar mezellour, hag eun tog ru ha glas ganti war he fenn.

Da gentan e sonjas n'e ket Jani e oa. Laret a reas diwar doull an nor :

— Piou eo ar strakel-man, gant he zog ru ? Pelec'h eo et Jani ?

Jani a zizroas krenn hag a jachas he zog da guz drek he c'hein, n'e ket c'houi lar ?

— Penôs, kanfanten, c'houi eo a zo aze ? eme ar vam ?

Ha da gregien tog, ha da gregien Jani.

— Eus a belec'h 'peus bet an tog-se ? — Mulgen-nou Jani a zo deut ken hurr ken ne deu gir ebet eus he geno.

— Laret a refet d'in eus a belec'h 'peus bet an tog-se ?

— Ar... ar... bi... bi... bilhaou... bilhaou...

— A ! ya ! ar bilhaouerez he deus roet anean d'ac'h ?

— Y... ya... a !

— Ha 'peus roet petra d'ei evitan, laret d'in ?

— Pi... pi... pi... pilhou !

E oant eno ouz o c'haoz, pa deuas c'hoaz unan bennak en ti.

— Penôs 'ta 'man kont gant an treo-man holl ? eme Yonan ar bilhaouerez, eur zac'had pilhou ouz he skoa deou. Penôs 'ta 'man kont ? Me zo o paouez kaout eur boned neve-flamm emesk ma filhou !... Hag eur bragou, zo koulz ha neve, hag eur c'houef bras a dalv bepred pemp lur warn-ugent ; eun hiviz vat... N'e ket ac'han, Mariana, eo deut an treo-man ?

Ha Yonan o tispakan boned Jani, hag hiviz ha mam, ha bragou he zad ha kouef he c'hoar... Ar vam a anaveas pep tra.

— He boned !... He boned neve !... O ! ma gallan bean krog 'n eur vaz !... Ha bragou he breur !... Santez ! Ha kouef he c'hoar !... Eur c'houef a dek skoed d'ar pilhou !... Breman zouden me ya d'ho teski !... Betek ma hiviz !... Gortozet !...

Ne c'hortozas ket pell ar paour kez Jani. Laket e oe losten en avel hag ar vaz endro ken prim ha war eun daboulin.

— Aiou ! aiou ! aiou !

— Eun tog ho po ? Me distago tokou diouzo'h !... Lakat er pilhou... 'vit eun tog... ma hiviz ha kouef ho c'hoar !... hag ho poned !... 'Vit eun tog... a bemp kweneg !...

— Aiou ! aiou ! aiou !

An abaden na badas ket pell, mes tenn e oe. Pa oa diskrog he mam diouti, Jani a dec'has 'n eur flouran traou he c'hein gant he daou zorn. Aiou ! aiou ! aiou !

— Kaset ho tog ganac'h ! eme ar vam d'ar bilhaouerez, ha ne digaset ket a dokou aman ken, klevet a ret.

Pa deuas Jani d'he c'hoan, e kavas goulou ha skudel.

— Laret ho pater hag et da gousket ! N'eus koan ebet aman evidoc'h !

Ar paour kez Jani ! Mont a reas d'he gwele, ha 'pad an noz e hunvras e oa eur plac'h, ha keriou d'ei war he fenn — eun diaoulez bennak, kredabl, — kas gwerzan d'ei eur c'hoz tog ru, eun tog a bemp kweneg ; mes arabad oa da Jani ober marc'hajou : en kreiz he c'houk zoken, he devoa sonj eus glasten he mamm.

DIR-NA-DOR.

MA ZOG PLOUZ MOGEDET

D'an otraou markiz Estourbeillon
Rener Kevredigez Broadus Breiz.

Kalz a dud a ra fars ganin,
Gant ma zog plouz trezennet ;
Nep an eus c'hoant rey gwap ouzin,
Gant ma zog bourlouzenet ;
O ! n'eus forz, gant enor me hen dougo,
Dre bevar c'horn Breiz en hon fardonio,
Ma zokig plouz mogedet.

Daoust n'hoc'h eus ken a goantiri,
O ma zog plouz trezennet,
Ho liou aour, am lak da virvi,
O tog plouz bourlouzenet ;
Ma zad koz mad, gant eun doru ijinus,
Ho tresennas ken koant, ken dudius,
Ma zokig plouz mogedet !

Pell 'zo, 'n eun diskwiz peurbadus,
O ma zog plouz trezennet,
Ma zad koz en Nenv 'zo eürus,
Ma zog plouz bourlouzenet ;
D'ober e ganvou, en koru an armel,
E oac'h miret 'vel eur releg santel,
Ma zokig plouz mogedet !

D'ho tougen 'fell eur gwir Vreizad,
O ma zog plouz trezennet,
Ken sederik war benn ma zad,
O tog plouz bourlouzenet,
Pa reas anaoudegez gant ma mamm,
E oac'h test eus o c'harante divlam,
Ma zokig plouz mogedet.

Hag en pign ouz an treust goude,
O ma zog plouz trezennet,
Brizet gant ar c'heilben bemde,
O tog plouz bourlouzenet,
Bugel dister o tiwan em c'havel,
Tro ha tro warnoc'h e tôlen eur zell,
Ma zokig plouz mogedet.

Krouadurig divad, spered treuz,
O ma zog plouz trezennet,
C'houi am fouetas, na sonj hoc'h eus,
O tog plouz bourlouzenet ?
Mes o c'hoari gant ma zad, war e c'hlin,
E kuzen ennoc'h ma fenn 'n eur c'hoarzin,
Mo zokig plouz mogedet !

Eus ma yaouankiz oc'h bet test ;
O ma zog plouz trezennet,
Bet oc'h ganin en meur a fest,
O tog plouz bourlouzenet,
Em joa, em glac'har, a-dost hag a bell,
M'ho tougo en enor da Vreiz-Izel,
Ma zokig plouz mogedet.

Em c'hozni, war ma fenn disto,
O ma zog plouz trezennet,
Er furnez ganac'h me gerzo,
O tog plouz bourlouzenet,
Groet ouzin 'vel ma zad koz ha ma zad,
Den a galon, gwir gristen, gwir Vreizad,
Ma zokig plouz mogedet.

Pa n'hellin ken rimaon zoniou,
O ma zog plouz trezennet,
Pa vin falc'het gant an Ankou,
O tog plouz bourlouzenet,
Mar denet war ma fenn d'ar Baradoz,
E vin deuet mat en-touez hon zent koz,
O tokig plouz mogedet !

PEN-BRETON.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOURANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

RENERDEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBIANNOU-KONVERZ

An Actrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer bez

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GEIZ.
Gant brezonek eo douet ar feiz.
Gant ar gallekeznio a Vreiz.
FURNEZ AN GEIZ.

Dalc'het bepred d'ho prezones
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve troc'het.
Ouspenn ar Vez, e ve Pae'h d!
MILIN.

KAROMP HON BEREJOU

Etre ar c'havel hag ar be,
E tibun kuden ar vuc...

Etre ar c'havel hag ar be e troomp, deilhaen ha deilhaen, al levrig-ze a hanvomp ar vuezeg.

Evrusted an de kentan ha glac'har an hini diwean a garg o daou kement ha kement kalon ar c'hrouadur, unan gant e levenez, egile gant e boan-spered. Mar deo skany al levenez, ar boan-spered a zo pounner, ha me gav d'in sonj an de diwean eo a chom c'hoaz ar startan ebarz ar galon; rak, elec'h eun el a den en eur vousec'hoarzin, henvel ouz eur vluen digor he lagadig d'ar c'hilizen-veure, an de diwean, evel eul laer, a deu da lemmel diganimp eun tad, eur vam, eur pried karet, hag, evel testi eus e grizder, e lez war e lerc'h eur c'horf yen ha dilavar...

Daerou, poan-spered, glac'har, dienez marteze, a dalc'ho eo en hon c'hreiz envor an hini vo tremenet, hag ar sonj a gement-se a raio d'imp karout ouspenn ar gwele diwean elec'h ma vo gourvezet...

Ar vered!... An douar zagr, distrempet gant daerou an holl; elec'h n'haller bale hep kavout aon da waska eun ine en poan, elec'h n'haller tremen hep laret eur bedennig evit ar re n'emaint ken... Ar vered! Elec'h man ar pinvidig war an hevelep troad gant ar paour, hag an den brudet ken sioul hag ar merer... Ar vered, elec'h ma koue pep kasoni, a zo evidomp eul levr digor dalc'hammad leun a gentelioù, a skouerioù talvoudus...

Mouez ar vered n'eo ket krenv; komz a ra koulskoude d'ar galon, ha mouez abed na ve welloc'h chilaonet eviti. Perak? Ar vered eo an amzer dremenet; skiant-prena, anaondegez, furnez ha c'houezen an dud koz, o deus da gentan poaniet start evit hon lakat evurusoc'h, ar vered a zalc'h en hon c'hreiz karante ar vio a vagas hon c'hendadou, a vir o c'horf, da c'hortoz digemer hon re... En eur gir, ar vered eo gwellaen histor pep poblad tud; hag abalamour d'ar re goz, abalamour d'o relegou zagr, hag ive abalamour d'imp hon unan, e tleomp mui-ouz-mui karout ha darempredi hon berejou gant fe ha gant doujan.

Diskwelet d'in en petore doare eman ho pired, ha me laro d'ac'h pegen birvidik eo ar Fe en kalon tud ho parouz. En gwirione, ar Fe ha karante ar Re-Varo a gerz dorn-ouz-dorn, ha diskar unan eo distruja eben.

Hep ar Fe, ar vered a zo eul lec'h heuzus; gant ar Fe ar vered a deu da vezan eul lec'h frealzus, a lak an daerou da ruilhal, mar karet, mes a zav ive ar spered uhel, uhel hag a garg an ine a fizianz hag a spi.

Setu perak an darn-vuien eus hon berejou a zo dalc'het-mat; pep-hini a lak eur zoursi aketus, eur boan dispar da gempenn e vezioù... Paourkez Re-Varo, pegwiro c'herent n'hallont ket stoui warne noz-de, da vihanan, ar bleun a ziwan hag a c'holo o gwele diwean, a deulo endro d'e c'houez tener pedennou a gerent-ze... Du-man ha du-hont, war be eur bugelig, eun dorn madeleuz

ha kristen a skrivo, evel eur strinkaden a fe, eur gomz a spi: — Elig bihan, ped evit da dud! — Hag en pob be, dindan ar bleunioù, pep korf a gousko e hun diwean luskellet gant mouez klemmus ar c'hilaz, hirvoud an avel o vervel hag hiboud ar wazig o tremen endro d'ar vered sioul, sioulik, aon d'ei da zihun ar c'horfou paour...

Laret am eus, luskellet gant mouez klemmus ar c'hilaz... Ah! ya, gwechall hon zudou koz o devoa fe... Evite ar c'horf maro n'halle diskwiza en peuc'h nemet en harz an iliz, an iliz santel elec'h oa bet badezet. En tu-hont, an dud koz na spontent ket rak ar Re-Varo hag o flijadur e vije, bep zul, stoui ha laret eur beden ouz troad bezioù o c'herent... Kaerat taolen, ha nag evurus e vije Doue hag an Itron-Varia o chilaou an den a deue goude an ofern da c'houlen true evit an Anaon!

Siouaz, n'eman ken kont evelse, en meur a barouz bepred...

Evel m'eo bet kenkouz kaet gant ma mignon Taldir, en e werzig tener *Ar vered koz*, an dudigou a-vreman a zo deut skoemp: — Pell, emé, ar c'horfou maro eus an iliz!... Ra vezo klozet evite eur park bennak a-goste, laket warnan eur gled-rastell, unan vras... Mat a-walc'h e voin, euo! Hag en meur a barouz eta, ar vered a ve kaset eun hanter-leo diouz ar bourk. Ar zul a dremen, ar zunvez abez... Tano, tano eo an dud a deu da bleustri ar vered neve. Sioul eman an Anaon ebarz o bered hautehagan... Allas, pell re sioul emaint, abalamour d'an ine!

Hag evelse, war zigare zavel eun iliz neve pe greski eur marc'hallaec'h, war zigare an dra zod-man, pe an dra divalo-ze, e welomp kalz eus renerien hon farouziou o tistruja o berejou koz hag o kas an Anaon pell pell da hirvoudi. Ac'hane e tec'h karante ar berejou; eur rum-tud na dostaont oute nemed eur wech ar bla da ouel an Holl-zent.

Er c'herioù, a dra zur, n'hall ken ar vered bezan endro d'an iliz, mes war hon maeziou, ne welan ket perak, evit petore digare e vefe pellaet ar vered...

Mar zo eun dra boanius d'eur baleer-bro, eo gwelet en hon farouziou an iliz teulet en kreiz an dachen evel eur c'hardi en kreiz eul leur. An Anaon, ar bezioù distaget diouz an iliz a zeblant bugale diframmet digant o mam... Mar gouel ar vugale, ar vam n'eo ket sederoc'h...

Kalz a gavo kement-man goro; ar wirione n'eo ken koulskoude, rak en touez mennoziou ar Franmasoned, mennoziou a deu a bep eil da vezan lezennou, eman, da gentan, an ezom da bellat ar berejou diouz an ilizoù, « mar c'hallfomp dre eno, emé, lemmel dimeus kalon ar re veo karante ar Re-Varo. »

Ar be, sonj ar Re-Varo a zo d'ar c'hristen eur reolen a vuc. Hep bezan diaze ar Relijion, ar vered, doujan an Anaon eo ar chaden a unan en karante Doue an dud veo hag ar re dremenet.

An dud fall a oar an dra-ze. En despet d'e, karomp bepred hon berejou, kenvroiz ker, karomp ané evel lec'hioù kentelioù; ha ken lies gwech e c'hallfomp harz an drubarded da bellat ar vered diouz an iliz, savomp hon mouezioù, en han' Doue, abalamour d'an Anaon.

AR YEODET.

SEMINER LANDREGER

War don: *Breudeur, ni glev*

Hirie c'hoaz, o Bretoned, c'han da zavel ma mouez, 'Vit stourm ouz an torfejo a rer bemde 'n honzouez, Evit difen 'n ho kalon ar garante wirion, A stage hon zadou koz ouz ar relijion.

Ha ne rann ket ho kalon, kristenien Breiz-Izel, O welat ar gasoni, an dizurz, ar brezel O deus c'houet en hon bro hon mestro dizoue, Enep ar greden gristen, eneup hon bugale?

Holl c'h eus klevet ho tadou vrudan ar Seminer, A zo zavet a geit so ebarz en Landreger: Kaer oa dre e lojeiz, mes kalz kaeroch oa c'hoaz Dre ar skiancho nerzus 'n eus hadet a-viskoaz.

Eno oa eur skol gristen brudet dre holl ar bed: Ar skiant hag ar furnez 'vije eno kavet; Darempredet ez eo bet gant ar gwir Vretoned, O deus heuilhet er bed-man lezen Doue bepred.

An dud ar gwellaen brudet oa eno o kelen Pôtre yaouank Breiz-Izel diredet a vanden, O stuman o c'hhalono da dremen eur vuc Leun a joa, leun a furnez, leun a zoujanz Doue.

Mes, siouaz, o Bretoned, an devez a hirie, Sellaer evel eun torfed prezek lezen Doue; Barnet eo 'ta d'ar maro an holl skolio kristen, En hano al « Liberté », 'n hano eur falz-lezen.

Lemmet eo ar Seminer digant e wir berc'henn, Evit ober dioutan eur skola digristen; Hag ellec'h ma vije kent prezeget komz Doue, 'Vo hadet ar falz kreden etouez ar vugale.

C'hoaz ouspenn kousto d'hon bro kalz keroc'h 'vit [gwejall, Derc'hel da ren en hon zouez kelennerien ar fall: Red 'vo paeen ar mestro, paeen ar vugale, 'Vit antren en ifern-ze da diski nac'h o fe.

Diwallet, gwir Vretoned, ne asantfec'h biken Bean d'ho pugaligo a-walc'h enebourien D'o c'has d'ar skol dizoue a zo 'n hon bro zavet, Dre eun torfed ken euzus eneup ar lealded.

Dalc'het bepred start d'ho fe, tud leal bro Dreger, Maget bepred 'n ho kalon sonj dous ar Seminer, Lec'h c'h eus tremenet gwejall eur yaouankiz [seder, Lec'h c'h eus kavet mignonned, mestro leun a [zousder.

Ha gret bemde eur beden, eur beden da Zoue; Ma tihuno 'n ho kalon ar frankiz, ar gwir fe, Ma welfont choaz digoret ha renet 'vel gwejall, Seminer ker Landreger, kavel an dud leal.

Yves-Marie PRIGENT,
Sholaer kristen, Eenvéan.

PETRA EO BEAN PERC'HEN?

Dre benôs bean perc'henn 'zo bean laer

— Laret a rafec'h d'in, c'houi hag a lenn kement-man, Петра eo bean perc'henn? Evidon-me, me gred penôs bean perc'henn a zo bean den.

— Ha bean diberc'henn a zo bean tocn?

— Ya zur!

— Neuze 'ta ar zent hag a oa diberc'henn...

— Gortozet eun tam. Ar zent n'int ket bet tud diberc'henn.

— Koulskoude, paour 'oant, peurvuian!

— Ya, mes bean paour n'e ket bean diberc'henn.

« Evurus ar paour », a lavar an Avel; lakomp warlerc'h: ha gwalleurus an den diberc'henn.

SAVOMP UHELLOCH HOR SPERED

Ar Vretoned o deus eur spered kaer meurbed, dishenvel bras dioc'h spered ar broiou-all, zoken dioc'h spered ar C'hallaoued a deu koulskoude kalz re d'en eur zila en hon hini. Spered ar Vretoned a zo eur spered a bouez troet dalc'hmaz warzu ar peoc'h, ar sioulded. Ne gar ket an trouz, ar berboellerezh. Ar Breton a dremen eun darn vras eus e amzer e douder e ene, ha, pa zigouez d'ezan dont ac'hano, e kaver eun doare melkoniet war e zrem. Ne dalv ket koms d'ezan a skanvadurezh, eus a blijadiourion ha n'int ket eus e du, pe e troio kein d'eooc'h evel pa vijec'h oc'h ober goap anezan.

Kement a draou iskiz a zo bet lavaret diwarbenn ar Vretoned, kement a liou a zo bet streoet war baper evit lavaret eo ar Vretoned tud gouez, sperejou tenval a dud, ma teu eun niver bras a dud estren bep bloaz gant an amzer vras, da ober tro Breiz, da welet tud ar ouen goz-se a zo kement a liano anezo dre ar bed.

Dont a reont dre hor meazion, mont a reont dre ar parkeier ha dre an tiez zoken; hag e reont goullennou, hag e klaskont gouzout penaos eo temzet spered ar Vretoned. Dibaot eo d'ezo avat deskil nemeur a dra evel-se rak ar Breizad n'eo ket sotoc'h eget eun all ha n'ema ket pell evit gouzout emeur oc'h ober goap outan. Skoet on bet meur a wech gant meur a hini eus ar respouchou-ze, kement a spered lemm a gaved enno.

Greomp atao evel-se, va c'henvroiz ker, kasomp ar Barizianed friou hir da vale diwar hon tro, pe e teuont evit spia hon doareou, pe evit prezeg d'eomp o zac'hadou gevier, pe evit goulen hor mouezion diganeomp.

Hon doareou, hor c'hustumou, a dalv, *da ne-beuta*, doareou ha kustumou pep bro-all; lavaret a ran ez int gwelloc'h zoken, kozoc'h int, ha dont a reont eus ar zent o deus great eus Breiz-Izel

Eur vro gaer hag eur vro zantel.

N'hon deus ezom ebet eus an estren evit dont da brezegi d'eomp kredennou nevez. Ar feiz a zo bet digaset d'eomp gant ebestel Breiz-Veur eo an hini a zere ouzomp ar muia: miromp-hi.

Hon mouezion a roimp bepred da dud eus hon gouen, eus hon spered, ha nan da dud ha n'hon anavezont nemet p'o deus ezom ac'hanoomp.

Lavaret a reer eo ar Vretoned sperejou tenval a dud. Eur fazi eo kement-se. Ar Vretoned n'emaint ket atao o c'hoarzin, an dra-ze a zo sklear: eur mare a zo da bep tra. Ar Vretoned a zo sperejou tenval a dud? A re a goms evel-se a dlefe dont da Vreiz-Izel da vare an eureujou, ar pardonjou, ar peurzorn, hag all, hag e weljent neuze ha tenval e vez pennou an dud.

N'omp ket sur henvel ouz ar C'hallaoued, ha ne vije ket mat d'eomp beza. N'emaomp ket evelto, o fringal, o youc'hal, o krac'hetal, n'emaomp ket evelto gant kaoziou ha n'eus penn ebet d'ezo: gwelloc'h e kavomp tevel eget koll hon amzer o lavaret traou netra.

Hon spered a zo troet gant traou a bouez, hen lavaret em eus. Hogen, diwallomp ha taolomp evez da goll ar spered kaer-ze. Ya, taolomp evez, rak koll a c'hellomp anezan, evel ma kollomp meur a dra-all. Ar spered kouls hag ar c'horf a rank beza maget. Hag ama an hini eo ema an dalc'h evidomp. Seblantout a ra d'in emaoomp war goll gant an dra-ma. Kalz a Vretoned, siouaz! en em ro d'an eva, hag a ev muioch eget ezom. Dont a ra o spered da bouneraat ha... da denvalaat, gant an tech milliget-se; hag o kenderc'hel evel-se da eva ha da eva e teu eur mare evito, ne zontont mui ken nemet er gwir-ardant. Traou ar spered neuze a ve great fae warno.

Sellit, setu ama eun dra bennak, evit skouer.

N'eus ket c'hoaz gwall-bell zo ez oa eur gouel brezonek e Keryann.

Lakeat oan bet e toull an nor evit digemeret

pacemant ar re a c'houlle mont da welet. Ar bern bras eus an dud a ysa hag a roe o arc'hant hep jalz. Eur gwaz a deuas hag a lavare mont evit... netra. « N'efet ket, emeve d'ezan. Red eo paea! » — « Pegement 'ta neuze? » — « Daou wenneg!... » — « Ma l ne baein ket! » — « Evel a gerot, mes ne vezo ket da vikana war zigarez m'eo re ger!... » Evel-se ec'h echuas ar gaoc. Abalafin, hon den a roas e zaou wenneg evit ober evel ar re-all; mez en doa, kredabl, ha n'eo ket hep abeg.

Mat, setu aze unan hag en doa diegi o rei daou wenneg evit mont da welet displega peziou-c'hoari eus ar re vrava, ha n'en divije het sellet ken test evit teulet peziou arc'hant war daol eun hospitaliri...

Spered a bouez ar Vretoned a zo toc'hor er seurt tud-se.

Toc'hor eo ive, mar n'eo ket zoken maro, er rummud tud yaouank, hag a-wechou, siouaz! e rummud tud war an oad, a deu da zilezet gwis-kamanchou ar vao evit golo o c'hroc'henn — pa ne ve ket lezet noaz, — gant ferbilhonou ar Barizianed!... Mez am eus o lavaret kement-all, ha koulskoude, va Doue! ar wirionez eo, ha netra ken.

Ha ne lavaran netra hizio eus hon yez benniget, ar brezoneg!

Va c'henvroiz ker, savomp hor spered eun tam-mig uhelloc'h; arabat eo d'eomp-ni, bugale eur ouen vrudet, hen lezel da goueza e strad ar gwer pe e truilhon an diavezidi. Arabat eo d'eomp teurel hon perlez d'ar... moc'h, ze na ve ket labour tud fur. Ar spered a c'hell trei awechou, siouaz! evel e c'hoarvez gant an dud sot. Diwallomp da goll hon hini, hag evit an dra-ze, lennomp al levriou skrivet en hon yez hag bervez hon spered; lennomp ive ar c'hazetennou brezonek evel *Kroas ar Vretoned* barrek da vaga hon spered breton ha kristen.

PLUENZIR.

BEZ AN NEVEZ-GANET

E harz eur bez paret a fleur,
Eur vam dener a yoa glac'haret:
Digouezet e oa, o gwall eur!
Ar maro d'he mab nevez-ganet.
— Sioulit, emezi, e kouskez,
Va bugel, en da gavel douar;
Mes ne zifuni mui jamaz!
Allas! didalvez eo va glac'har.

Da blaneden ne dlefe ket
Lakat em c'halon ar c'hoant gouela:
Al labous, a hoan dinodet,
A rank klask an tam evit beva.
Dilezet grons gant mam ha tad,
Dindan an avel, an erc'h, ar glao,
Ar paour kezig a gav er c'hoad,
Alies, meur a c'hreunen c'hoero.

Brema emoc'h en leac'h distro,
Dioc'h gwall-avel, pep faltagriez:
Da galon mirel 'vo ato
Dioc'h alan put ar vreinadurez.
En doare ma varv ar rozen,
Hep dispaka he deilhou lufant,
He c'houez vat ganti a dremen,
Vel-se ganit da galonig glann.

Meurbet eurus eo an hini
A gav ar maro en e gavel,
Kas a ra gantan eul lili,
Ha ne dle mui birviken mervel.
Heb anaout anken na mizer,
E holl deisiou a dremen joais:
O vonsc'hoarz ouz eur vam dener,
O pokat d'ezi karantezus.

A boan serret e zaoulagad,
Fors eligou a zeu da gerc'hat
E ene kaer 'vel al lili,
Ha d'he c'has da Jezuz, da Vari,
Evit beza da holl-jamez,
Ha gant ar zent hag an Elez,
E palez santel an Dreindet,
Laouenik hag eurus bras bepret.

J. C.

AR MESTR-SKOL YAOUANK

— De mat, aotrou person, eur c'helou mat am eus da laret d'eooc'h hizio.

— Ha! gwel! a ze. Petra 'zo a nevez?

— Va mab a zo o paouez kaout e... desteni a vestr-skol!

— Hat pebez eurvad!

— Ha breman her c'hasin d'ar skol « normal » d'achui e studi evit mont...

— D'en em goll!

— Nan, aotrou person, da vestr-skol dindan gouarnamant ar Republik...

— Mes, va den mat, ho mab a vezo kollet er skol « normal »... En han' Doue, n'her c'hasit ket di...

Kasit-hen d'ar skolioù kristen e leac'h ma kendalc'ho bepred da veza mat evel ma 'z eo breman...

— Ma! aotrou person, mont a raio!... Great eo an taol... Hag ouспен, va mab a zo bet kenteliet mat-dreist war gwirioneziou ar relijion hag e gendalc'ho da veza eur c'hristen mat bepred... Paourkeaz tad berwelet!...

« Tri bloaz goude. — En eur c'hlast, dirak skolioerien yaouank, kroaziet o diweac'h ganto ha digor o daoulagad o sellet ouz ar mestr-skol aezet war eur gador rouret. »

Arak komans da labourat, ar mestr-skol a ra d'ezo eun tam « instruction morale » a c'hiz nevez. »

Bugale ker.

« Hon tadou koz gwechall, dallet gant ar veleien, a brezege liano eur c'halomper-hent a Jude, a grede holl ar c'haeziou a deus eus genou an dud fall-ze. Kredi'reent ez oa eun Doue en Nenv hag en doa krouet pep tra hag a reize pep tra war an douar gant e zorn holl-c'halloudek. Kredi'reent ez oa da azeuli an Doue bras-ze, hen anaout evit hor Mestr hag hor C'hroner hon-unan, da douja d'ezan evit mont goude ar maro da joausted peurbadur ar Baradoz. »

Breman c'hoaz, daoust d'ar pez he deus great ar Republik evit lakat an dud da zilezel o c'hredennou diot, e vez kavet, e Breiz-Izel, tud sod a-walc'h evit kredi ar veleien, ar gaouiadeg bras-ze a gustum o laerezh bemdez.

Pebez berretez, bugale ker! Pegen sod eo ho tud o kredi diotachou evelse...

(Meur a vogel a rus-gant ar gounnar.)

Nan, bugale, n'eus Doue ebet.

(Ar vogel a sigor o dioukouarn gwasoc'h gwaz.)

N'eus netra uhelloc'h eget an oabl; godlo eo an nenv!... Pell 'zo, Viviani en deus lazet holl ar goulaouiou a yoa ennan war elum ha breman eman an nenv er vrasa tenvalijen...

Ha piou eo ar skolaer-ze? Heunez eo ar bugel kristen gwechall « desket mat war gwirioneziou ar relijion »! Setu aze ar bugel nerzus a dlie chom yac'h etouez breinadurez ar skol « normal ».

Setu aze frouez ar skolioù dizou!

Paourkeaz tad berwelet!... Gwel petra eo deuet da vab da veza!...

Eur Breizad.

Doue ha Breiz.

SANT ERVOAN HAG AR C'HOULMED

Setu eur c'hrog savet adarre etrezomp-ni, bugale Breuriez ar Brezoneg.

Beac'h eta d'al labour! Evidon-me a ray va lod gwella ma c'hellin. Kustum oan dija da lenn *Buez ar Zent*, hag holl e welan o deus bet eur gwir feiz hag eur gwir garantez evit an Aotrou Doue, mes sant Ervoan a zeblant beza bet diba-

bet azaleg e vugalech da ober burzadou. Setu aman da vihana eur burzud hag a ziskouez pege-ment a fizians en doa Ervoanig en Aotrou Doue.

Eun dervéz — an dra-man oa en miz genver — e oe lavaret da Ervoanig gant e dad mont da ziouall an ed a yoa nevez-hadet.

Gout a ouzoc'h pegement a boan a vez gant ar brini pe ar c'hudoned pa stagont da zisken war ar parkeier, revina reont an edou. Me zo bet va unan, meur a wech, o klask miret outo da zisken war an ed, hag em beze beac'h a-walc'h goude strakal va daouarn ha youc'h al warno :

Brini loued,
O klask o boued,
An hini vo warlerc'h er ger,
En do bac'hadou gant va foet ler.

Ervoanig eta, boazet da zenti war ar ger, a redas d'ar park. « Sell-ta, emezan, ar gloued a zo digor; eas a-walc'h e vije sur d'ar c'hudoned mont er park; me, emezan, zo o vont da brenna mad ar gloued » ha goude beza gret eur beden galonek da Zone e redas d'ar ger en eur c'haloup.

« Hôla Ervoanig, eme e dad, n'out ket chomet 'ta da ziouall an ed? » — « O va zad ! emezan, me 'm eus prenet mat ar gloued hag em eus lavaret d'an Aotrou Doue miret na ziskenna ar c'hudoned da zibri an ed ! »

E dad na lavaraz ger; sonjal a rea pegent start oa ar feiz e kalon e vugale hag ez eas e-unan d'ar park, mes na pegent sonezet e chomas o welet eur vanden kudoned o nijal en-dro d'ar park evel eun hed gwenan : Doue en doa selaouet peden Ervoanig, hini ebet anezo na ziskennas er park.

An Aotrou Doue na c'hell nac'h netra ouz an hini en deus eur gwir fizians eunan.

Marceline KERBRAT,
9 bloaz eus boue;
Lok-Egrier dre Sant-Thegonek Penn-ar-bed.

Doue ! Breiz !

KEUN HA MENNOZ

Dan Mignon Roc'hlan.

Eveldont-te, Roc'hlan, 'm eus klevet er peilder, Eur vouez o c'houz zikour evit difenn ar Vro, A venner mui-ouz-mui he lakat d'ar maro; Ma c'halon 'deus tridet gant ar c'haly ken tener.

Eus an dachen hirie mar gomp eur tam distro, Ni bedo a-gevred evit hon c'hevrendeur, Da c'hortoz an devez ma teufomp gant preder Da labourat gante eur penn eus an ero.

Rak ar pez a lerez, siouaz, 'zo re wirion, Mouez ar Breizad treitour a glever o tiston, Gant mouez raouiet ar Gall, o klask laza hon Bro.

N'eus krisoc'h tra er bed 'vit gwelet eur bugel O klask lakat e vam, gwasan m'hall, da vervel ! — O mam ger, ni ive, eun deiz az tifenna ! ..

Mabig EFFLAM.

KELIER EUS AR VRO

BREIZ-UHEL

AN HAVR-NEVE. — Pardon bras ar Vretoned. — Ebarz iliz Sant-Fransez, ar 26 eus ar miz-man, ar sul diveza eus ar miz, e vezo gret gouel Santez-Anna, patronez Breiz-Izel.

Da hennp eur eus an abardae e vezo kanet e brezoneg ar pedennou eus an noz. Goude ze, sermon gret gant an Aotrou HELLO, person Gouesnac'h (Côtes-du-Nord), ha prosesion Santez Anna.

Pedi a ran ar Vretoned, hag ispisial ar wazed, da zont d'ar pardon-se, a zigaso d'eomp oll sonj eus pardonioù kaer hor bro muia karet.

Digaset ive ganeoc'h ho pugale.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

COADOUT. — Pardon sant Iltud. — Kement a zo bet zakret gant an Iliz a zo zur da vevan ha na varvo ken. Evelse e c'hoarvez gant zent hon Bro hag o fardoniou. Aboue trizek kant vla

e veroc'h ober bep bla darn ane, ha bep bla e tizroont war o c'hiz, evel ma tizro d'o c'houz an nevez-amzer hag ar goanv.

Pardon sant Iltud a zo unan eus ar re-ze. Sant Iltud a zo unan eus patriarked Breiz-Izel, ha Breiz-Veur. Eus eul ligne uhel ha pinvidik, e savas war e zouar eun ti-skol eus ar c'haeran evit kelen an dud yaouank war gwirioneon ar fe ha war skiaouchou ar bed. Noblans Breiz-Vreur a gasas davetan o bugale, ha gant lies a hini ane, hen a reas zent, zent hag a deuas goude da Vreiz-Izel da brezek ha da gelen eveltan. Sant Pol, sant Samson, sant Magloar, sant Davi a zo bet zavet gantan, ar pez a ra d'in laret eo sant Iltud unan eus patriarked Breiz-Izel, p'eo gwir hen a zavas darn eus ar re o deus savet hon Bro.

Sant Iltud, dre n'e ket bet en e vne en Breiz-Izel n'e ket kant anaveet ha zent-all hag o deus bevet en hon bro. Paton eo da c'honec'h parouz en Breiz-Izel, da Landebaeron, da Laniltud, de Aberiltud, da Droguey, da Zant-Ideuc ha da Goadout.

En Coadout e oa disul e bardon, 'vel ma ve bep bla, an eil zul a viz gouere. Kalz a dud a deu an de-se da bedi sant Iltud ha da gas prof'd'ean, dreist holl 'vit o loened. Ar bla-man oa leun-kouch an iliz en oferen-veure, ken ma renke tud ar barouz chom ermez vit rei plas d'ar belegrined.

Ar pardon a oa gret gant an otro Brient, kure Boulviak. En oferen-bred e reas eur zarmon, o kemer da skouer, evit heuilh eur vne vat, bue sant Iltud. Prezeg a reas gant kalz a nerz ha gant kalz a skiant, o tibab gant poell komzou ar Skritur zakr hag o lakat ane sklér dirak an daoulagad.

D'abarde, e oa ar prosision hag an tantad goude ar gousperou. An otro Rivoallan, person Coadout, 'vit rei muioc'h a dro d'ar gouel, an evoa pedet kléronerien ha taboulinerien patronaj Gwengamp, da zont d'ar pardon. Arruout a rejont 'benn diou eur gant an otro Guezou, kure ha zikour a rejont kalz tennan an dud da heuilh ar gousperou hag ar prosision. Sant Iltud an evo mous-c'hoarzet oute, rak ar vugale a blijte kalz d'ean.

Pedet e ve 'vit al loened, mes pedet e ve ive evit ar vugale. Hirie, avat, ar re-man o deus muioc'h 'vit biskoaz ezom a bedennou, pa 'man ar framasoned kas lakat o c'hrog warne, kas tennan 'ne adre daouarn o zud ha gwerzan 'ne d'an diaoul, dre zikour ar skolioù dizoue.

Sant Iltud a zo bet 'pad e vne mestr-skol; savet an eus eleiz a zent etouez e skolaerien. Red eo pedi anean da gaout truez ouz bugale vihan Breiz-Izel ha da viret ane eus gwalen ar skol fallakr a zigor he geno frankoc'h bemde, d'o lonkan.

Sant Iltud, pedet evit bugale Breiz !

CALLAC. — Breuriez ar Brezoneg. — Bet zo en skolioù kristen Callac eul lennadeg brezoneg evit ar vugale a oa da gaout o zesteni studi.

Bean oa 22 bugel. Setu aman o hanoioù dre renk :

Jean Augel, Théophile Philippe, Joseph Tallec; Jean Le Bon; Pierre Biniguer, Théophile Le Roux; Jean-Baptiste Auffret; Jean-Marie Auffret, Maurice Le Cam, Guillaume Lozac'h; Jules Hélar; Yves Moignot.

Anna Bourhis, Marie Allain, Marie Bihannic; Zénaïde Quémener; Louise Gobichan, Francine Le Gall, Philomène Auffret; Anne-Marie Trineuff, Louise Cozie; Anne-Marie Prigent.

Breuriez ar Brezoneg he deus kaset d'ar vugale-man eiz priz ha 14 accésit.

Ar re ane a gwita ar skol a hall, ma maent en oad, rei o hano da Vreuriez ar Brezoneg ha kemer Kroaz ar Vretoned evit 8 real.

N'hallfemp ket trugarekat re otro person Callac hag ar mistri ha mestred, da vean roet d'ar Brezoneg en o skolioù ar plas a zo dleet d'ean a-viskoaz. Pa 'n evo gret pep skol kement-all, hon devo gret eur gammad vras war rok, ken bras ken ne vo ken gallet souzan a dre, ha stad ar Vro en em gavo tam ha tam gwellaet en pep doare.

KINTIN. — Eun Arabiad en kêr. — Souezet bras eo bet tud Kintin o welet o tremen sonn ha reut, eur zae wen warnan, eun tam lien « Kalcot » endro d'e benn, eur pikol deu da e lagad, duet e zrem gant an heol.

Eun Arabad e oa, kourater en Biskra, deut da welet eun Itron vadelezens en doa anaveet en

Afrik. Re dom eo an amzer du-man, a lare, n'eus tra d'ober war ma micher, pan-e gwir n'eus ken European ebet. Dent on da glask eur euzennig er fresk en bro ar gristenien.

An dud a c'hoarvez gantan eun tam, ar vugale a heuilh anean er ruion. N'eus forz, ne zoursi tam ebet ma plij d'an dud gant e wiskamant iskis. Eur skouer d'ar Vretoned, a ve ken mezek, er c'heriou gall, gant o zoko rubanet pe o brageier bras.

PLIJIDI. — Gouel brezonek. — Ar yaou, 23 a viz gouere, e vo eun devez a dudi e Plijidi. — Da 10 hent eus ar beure, potred yaouank ar Patronaj a zigoro ar gouel gant « Ma Doue ma Bro » pez c'hoari brezonek e 4 arvest. — Da 2 heur goude kreiste, e vo tro ar marc'hed hag a zisplego, eur eur pez-c'hoari brezonek e pevar arvest, bue burzudas ha merzerenti gallet santez Thecla, ar gentian merzerez, bet gouneet da Jezuz gant an abostol sant Paol.

Eltrant a vo sonioù ha gwerzioù brezonek, hag eur brezeg gant an otro Clerc, an hini 'neus gret levrioù kaer.

Da zul, de gouel santez Anna, e hadkrogo an traoù da deir heur goude kreiste. En eil de, koulz hag egile, e vo klevet Barzed o prezek hag o kanan.

Dihonet out breman, ma Breiz !

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelennor Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

PIPI GONTO

Murvailhou neve

gant E. AR MOAL (DIR-NA-DOR)

PRIZ :

5 real; ha 1 gweneg ar frêjou-kas, da lavet eo

nao gweneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag neu sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivvan reiz ha sklér ar brezoneg.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, bali Charner, Sant-Briek.

GOULENNIT

E Ti-Moulerez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotrou abad BLES, golcenn kartoz ha skep-dannou (gant ar frêjou-kas).....	4 real.
Prezegon iour Buez ar Vro, gant Job an Her.....	3 gweneg.
Hent ar Groaz.....	3 gweneg.
Bue sant Anton a Badou.....	3 —
Pedennouigou ha kelennadur d'ar vugale.....	3 —
Merzerenti an Tad Perboar.....	1 —
Bue an Tad Perboar.....	1 —
Al leaz.....	1 —
Meulodi al labourer.....	1 —
Gwerz sant Milla.....	1 —
Gwerz sant Koveri (skeudennet).....	1 —
An diaoul-patr.....	1 —
Kan an Islanded. Kentoc'h mervei. Peden ar partoloded. Gwerz sant Kemo, hag ail.....	1 —
daou erit.	

Eun diskenn war ar priz evit am eur hini.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

— Petra eta eo bean perc'henn ha diberc'henn ?
 — A ! Bean perc'henn a dije bean c'hoant pep den war an douar...
 — Ha n'e ket ? Me wel an holl kas bean pinvik...
 — Bean perc'henn ha bean pinvik n'e ket memes tra, c'hoaz eur wech ! Gallout a rer bean pinvik hep bean perc'henn, ha bean perc'henn hep bean pinvik.

— Penôs ze ? Rak n'intentan gir ebet en ho kaoz.

— Bean pinvik n'eo nemet eul loden, hag an disteran, eus bean perc'henn. Bean perc'henn 'zo bean mestr da gement tra a hall lakat ac'hanomp da vean muioc'h den. Hogen, petra, dreist an treo-all, a lak ac'hanomp da vean muioc'h den ? Ar boed, an arc'hant, ar madou ? Nan ; ar pezh a ra an den eo ar frankiz : frankiz ar relijion, frankiz ar yez, frankiz ar vot, frankiz ar skol, frankiz al labour, ha goude, frankiz ar peadra.

Mes na c'houi na me n'omp mestr d'hon zi, nemet dre ma omp tud, ha dre ma 'n em diskouomp evel tud, o viret hag o tifenn hon holl liberteu, hon holl frankizio. Al loen n'eo perc'henn da seurt ebet ; al loen a zo tra e vestr, d'ean da werzan ha da lazant ; hirie 'man stag war alar al labourer, varc'hoaz vo stag war gwetur ar bourc'hiz, hepred tra unan bennak, gwech ebet e vestr e-unan.

Gwechall, rôk donedigez hon Zalver, 'vije gret evelse d'an dud ; hirie, 'vit o c'hastizan, 'vo gret c'hoaz. Rak, ma n'omp mestr d'hon danve, nemet dre ma 'z omp tud, ha ma n'omp tud nemet herve ar zoursi a lakomp da zifenn hon liberteu a Gristen, a Vreton, a Benn-tiegezh, eo ezet goût, pa vo dilezet ganimp hon liberteu, e kouefomp en renk al loen ha n'hall ket bean perc'henn. Neuze vo diframmet, *herve ar réson*, hon zra adre hon daouarn, 'vel ma ve diframmet, herve ar réson, an tam eus geno ar c'hi. D'eur c'hi ve roet bep pred peadra 'vit magan anean, mes ar pezh a roet n'e ket d'ean eo, d'ac'h eo ; n'e ket dleet d'ean, zoken ; pa garfet e lezfat anean da yun ; eur c'hi, n'eus forz petra dap na da hion, 'zo laret e ve *laer*, rak 'n eus netra d'ean e-unan, abalamour 'neus ket a spered nag 'neus ket a ine. Mes ni, hag hon deus spered heg ine, ma ne reomp forz ebet eus treo ar spered hag an ine, eus hon liberteu, ni a goueo ive en renk ar c'hi, hag e haller neuze lavaret ive ac'hanomp, 'vel eus ar c'hi, eo laeroni kement hon deus hag hon devo. Ar gouarnamant a deuo neuze, pouezet gant Doue 'vit hon c'hastizan, da lavaret d'imp en hon zi :

— Tec'het diouz an ti-ze, hennez 'zo *laeret ganac'h*, hennez 'zo d'in !

Neuze c'houi difenno ho ti, 'vel ma tifenn ar c'hi e askorn, gant hoc'h *ivinou* hag ho *tent* ; mes ar gwir, an « droit », na vo ken ganac'h ; ne vo ganac'h tam 'bet muioc'h 'vit n'eman gant eur c'hi o tifenn e askorn. Ha setu eno penôs « bean perc'henn 'zo bean laer », 'vel ma lare Proudhon. Bean perc'henn 'zo bean laer, pa ne glasker miret na difenn nemet ar madou, an arc'hant, tra ar c'horf, hep zoursial eus al liberteu, tra ar spered, d'o miret ha d'o difenn.

En gwirione vat, ma ne vije ket gras Doue, aluzennou ha pedennou an dud santel o stourm bemde ha bep eur evit madou ar spered, al liberte hag a wirione, madou ar c'horf a vije et houe pell 'zo en geno ar gouarnamanchou, ha ni vije kouezet en renk ar Sklaved gwechall.

Sellet endro d'ac'h ; pinvidien ha peorien, ped a glask madou ar spered, liberte ar relijion, liberte ar yez hag ar vro, liberte ar skol hag ar gelennadurez ? Pinvidien ha peorien, eul loden vat ane, marteze al loden vras, a labour evit ma koueo warnomp gwalen ar Socialism, gwalen ar Sklavaj. Ya, panevert d'eul loden vihan a dud kalonek renet gant Spered Doue hag e iliz, hag a glask dreist-holl madou ar spered hag an ine, ni, tud berwelet, n'hon dije

ken na peadra, na bro, na hano. Daoust hag eur c'hi an eve eun ti, eur vro, eun hano, nemet ar re a ro hag a lemm digantan e vestr ?

Eur c'hoz Trégeriad.

GALVADEN D'AR BARZ

Kinniget d'an Zonton eus Pontre.

Mignon, mouzet eo da delen,
 Aboue pell so,
 Ne glevan ken he mouez 'vel kent,
 'Dreus d'ar c'hoajo.

Eun delen a gane ken kaer,
 Gane ken flour,
 Telen eur barz kalon dener,
 Eur galon aour.

Tostât 'ra pardon Pontreo,
 Pardon brudet,
 Pardon Itron ar Feunteunio,
 Hon mam garet.

Mignon, kan 'n enor d'ar Werc'hez,
 Ar burzudo,
 Reas gwejall he Fatronez,
 En Pontreo.

Itron, Gwerc'hez vad Pontreo,
 Hon mam zantel,
 Klevet, m'ho ped, ar pedenno,
 Ra ho pugel.

Evit ar barz bedan hirie,
 A greiz kalon,
 Da rei yec'hed hag hir vue,
 Da ma Zonton.

Ma kano war e delenig
 Soniou karet,
 Ma frealzo hon c'halonig
 Ken glac'haret.

L. C.

Lanrodek

Daou ouel war eun dro

Pêr B., eus a Lanrodek, ha me a zo a dud, hag aboe pell-ze. Setu 'pez an neus talveet d'in bean bet meur a wej en pardon Lanrodek. Eur c'haer a bardon hep bla : mes disul divezan am eus an kavet kaeroch evit biskoaz.

Neb a anave an otro Fenvarc'h hag a deuo da c'hout ec'h e bet instalat en de-ze evel person ar barouz, na vo ket souezet gant se. Ar vrud vat anean a oa dent en e rôk ha dre ze an noa klasket an oll ober an treo war an ton bras.

An iliz na oa ken evidon ar memes hini gant a gaer e oa : Hi, ken dister, he doa kemeret eur gwiskamant eus ar pinvikan. Pa larin e oa 'n he c'haeran, ne larin ket trawalc'h : biskoaz ne oa bet gwelet en dro d'ei ha dreist-oll en dro d'an ôter-veur ken lies a c'harlantezen, ken lies a voked c'houez vat ha ken lies a zrapo. Lanrodegiz i o-unan a chome sebezet 'n eur welet kement all. Gout a wient a dra-zur ec'h e dornet mat o c'hure, an otro Loyer, evit kempenni pep tra en iliz, ha kenkoulz dornet ar gristenien kalonek a ro zikour d'ean evit-se.

Mes ar wej-man memes tra e seblante ar reman bean grêt eun dra hag a oa dreist o gallout. Setu petra e kaout eur garante d'ener evit patronez santel ar barous, an Itron-Varia-Wir-Zikour. Eun dra grêt gant kalon na ve gwej ebet hanter-c'hrêt.

Daoust piau ive an nevoa eunet pep tra er vered ha goloet ar beio a vokedo ? N'oufen ket hen laret, pa n'anavean ket trawalc'h ar barous : mes bepred e n'em eus ket teulet ple d'eur yeuten he dije hontet etre ar beio ; ne gredan ket e c'hallfe ar vered vinniget-man bean netloc'h 'kerz gouelio an Oll-Zent. Doue sur mat a bardono d'anaon Lanrodek : rak pa bleo kement gant o beio, e leur ive pedi evit o ine.

Mes setu an driet kloc'had o son. Eur pemzek beleg bennak, en o zouez an otro chaloni Covec, unan eus personed Dinan, hag an otro Pavy, person Plagat, ac'h a en prosision 'tresek ar presbitoar. Mes hastomp distrei d'an iliz gante ha gant

an otro Fenvarc'h, ar person neve, ha selaouomp ar prezenno a rer breman enni. An otro Pavy a gomz en galleg hag an otro person en brezoneg. D'ober petra lakat ar pezh a larjont ? Ezet e goût ne larjont nemet komzo dereat ha kalonek.

A sort gante na gomzont ket aheadall. Mes laret a rin am eus gwelet o tidouran daoulagad ar barousianiz pa oa o ferson er gador : teneraet e oa ha goneet da vat o c'halon gant e brezege. Nan : n'e ket hep abeg e laras d'e an nevoa an esperans d'ober ar vad en e barouz neve. Tud hag ac'h a evelse komz ar beleg beta fons o c'halon a c'heller kontan warne evit gloar an Otro Doue ha mad an ineo.

Breman e kroger gant an oferen bred. Ouz an oter, en daou du d'an otro person, e welan an otro Corre, person Plouvouskant, hag an otro Clerc, kelener en kolaj Gwengamp, an hini a labour kement evit ar brezoneg. Heman a zo eur bugel eus ar barouz hag ober a ra enor d'ei kenkoulz hag e dri genvroad, an otro Simon, person Tregone, an otro Alexandre Auffret, kure en Gwengamp, hag an otro Joseph Auffret, kure en Perroz. Hag o fevar emaint hirie en Lanrodek, deut da ziskouel d'an otro Fenvarc'h e zo stad vras enne o welet 'nean person en parouz o ba-deiant. Rak int ac'h anaon nean a bell-ze hag a oar n'hellent kat gwelloc'h evitan.

O c'henvroiz a Lanrodek avat a oa disanav o ferson neve evite. Koulskoude ec'h int deut a-leiz hirie d'an oferen bred evit hen gwelet ha klevet e gomzo kentan : leun chouk e an iliz. Pedi a rer, kanan a rer ; ar vugale dreist-oll a zav o mouez skanv ha skiltr evit eilan gant mouez pouner ha fetis ar ganerien vras epad a *Gloria* hag a *Gredo*. En eur gir, eun dudi e heuilh an oferen.

Ken kaer all pe gentoc'h kaeroch c'hoaz ec'h e ar gouspero, kanet mac'h int gant sikour eun ugent bennak a glianted deut espres-kaer deus Kastelaudren gant an otro Moltais, o c'hure, evit kléroni ha taboulinan. Ha bravat m'eo o c'hlevet o son epad ar prosision ! Sellet oute ive ; rag eur gwiskamant o deus, ar memes hini 'vit an oll, hag a ra ar vrasan plijadur d'an daoulagad.

En o rôk e kerz daouzek martolod bihan, bep hini gantan e dra da dougen : darn lod eus eur vatimant, darn roenno, darn kerden, ha me oar petra c'hoaz ? Eur yec'hed ive o gwelet. Hag ar merc'hed a oa en gwenn eta ?

Mes fellout a ra d'in krennan ma skrid. Dre-ze ne larin ken nemet eun dra : bean oa eur stal a botred hag a verc'hed o heuilh ar prosision, hag er renk kentan, 'vel just, an Otro Ar C'holvajer, m'êr, hag an Otro de Saint-Jouan, eil-veur, bep hini gantan eur zeien a dri liou.

Setu roet ganin eur skeudennig eus ar pezh am eus gwelet eus an daou ouel kaer a zo bet lidet en Lanrodek disul en enor d'an Itron Varia ha d'ar person neve.

Mes bean zo tud eus ar barrouz ha zoken diavezidi hag o deus bet muioc'h a chans evidon : ar re o deus bet azeet ouz tol an otro person goude an oferen. A n'e ket abalamour d'ar pezh a c'hellout bean debret pe evet em eus anv oute. Nan : pac'h on da di ma mignon Pêr B. da brejan, kredet hardi, ne ven ket da glemm. Mes klevet 'meus ar gousailhenien, re an iliz ha re ar gommun, o laret e zo bet gret er presbitoar, da zibenn ar pred, prezenno a c'houc'hemen, hag eus ar re gaeran : An O. Person, an O. de Saint-Jouan, an O. Clerc hag an O. Covec o deus komzet tro-ha-tro ha laret, eme, kalz a dreo c'houek, leun a boell hag a skiant. Mann nemet klevet disrevel an treo-ze a laka an douar da zont en em geno.

Mes petra a dalo d'in delc'henn d'ean em chakat abalamour ma zo bet tud evurusoc'h evidon ? A-walc'h ec'h e d'in kridi vo bet gwelet spered an dud-se ha startaet ar fe gristen en o c'hreiz gant ar c'homzo o deus klevet, hag, a drugare Doue, lec'h am eus d'hen kridi.

ER TREMENEZ.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANC'HOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

REKREMEREN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemoz aez

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GREZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallekzoù a Vreiz.
FURNEZ AN GREZ.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trac'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'hed di
MIZ.

GLAC'HAR HA TRUGAREZ

An dra-ma a yoa e mare an dispac'h bras. N'oufen ken lavaret e pe garter e c'hoarvezas, an histor a zo mut war gement-se.

En eur gear eta e touged kalz a zoujans d'eur skeuden d'ar Werc'hez a veled en iliz parrez abaoe n'ousped kant vloaz. Eur re bennak, digalon ha difeiz, a gavas mat disken anezi eus al leac'h m'oa henoret gant ar bobl fidel. Al labourer, na petra 'ta, a oe great e kreiz eur jolori, el leac'h ma klevet dreist pep tra ar sakreou, ar gwas leoudoued hag al lavarion dismegaususa ovis Doue hag an Itron-Varia. Evit diskouez pegen difeiz e oa, unan eus ar baotred a lavaras teurel ar skeuden en eur puns. Ar mennoz a oe kavet mat gant eun darn, hag ar re-all a oe skoet o c'halon da vantri o klevet kement-all. An hini en doa komzet evel-se a boanias ar muia ma c'hellas da zeven ar mennad iferius en doa goulenet. Taolet e oe eta ar skeuden zantel er puns, hag adarre e oe klevet fors jarneon, mil lavar fallakr ha direspet enep da Zoue hag an Itron-Varia.

Al levezeg evelato na badas ket pell. An hit i en dea goulenet teurel er puns skeuden goz ar Werc'hez Vari a deus en eur taol da veza dall. Ma oe red digas anezan d'ar gear dre an dourn. E galon avat na deus ket da deneraat evit an draze. Chom a reas dizoue ha dall. Ar gentel a dalvezas d'ar re-all; ar re-ma o doa gwelet sklear.

An amzer a dremenas, ar peoc'h a deus adarre er vro hag ar relijion a oe savet a-nevez.

Ar skeuden garet a yoa chomet koulskoude e strad ar puns, hag an holl dud honest eus ar barrez a zouje euni gant glac'har. An aotrou person a lavaras d'ezo eun dervez a oe :

— « Red e vezo d'eomp, va mignoned, digoll an Itron-Varia eus an dismegans a zo bet great d'ez. Ni a adsavo ar skeuden eus ar puns el leac'h m'eo bet taolet dindan hon daoulagad. »

An holl a gavas mat kenan ali an aotrou person. Pouchaset e oe pep tra, ha dibabet an dervez. Eur gouel kaer e oe.

Holl dud ar barrez a yoa bodet endro d'ar puns, ne vanke ken nemet an aotrou person; edod o c'hedal anezan. Dont a reas, hogen n'edo ket eunan. Krog e oa e dourn eun dall anavezet mat er c'harter. Hennez, a dra zur, n'edod ket war c'hed anezan el leac'h-se, pell ac'hano.

An aotrou person a zavas e vouez e-kreiz an tousmac'h, ha pa oe peoc'h e lavaras :

— « Kristenien, emezan, ar paourkez dall-ma a zo deud d'am zi er beure-ma, bourrevet e galon gant brouded e goustians, evit goulenn ganen ha ganeoc'h eur c'hras ha na vezo ket nac'het outan; sur oun eus hoc'h ali, ha setu perak em eus roet d'ezan, en hoc'h hano, ar pez a c'houlenne. C'hoant en deus e lesfac'h anezan da jacha ganeoc'h war ar gorden a denno bremaik skeuden ar Werc'hez eus ar puns, el leac'h ma labouras d'he zeurel, brema ez eus dek vloaz. Keus en deus d'an torfed-se a reas d'ezan, ha n'eo ket hep abeg, dont da veza dall; goulenn a ra trugarez an aotrou

Doue hag ar Werc'hez, hag hoc'h hini c'houi ive, kristenien. Gallout a ran lavaret d'eo'c'h o deus Doue hag ar Werc'hez selaouet e beden; d'ho tro, va breudeur, ho pezet truez outan. »

— « Ya, eme an dall oc'h astenn e zourn, endra ma tivere an daelon eus e zaoulagad, ya, goulenn a ran beza dizammnet eus ar bec'h pouner a bouez war va buez; n'em eus mui peoc'h ebet; va c'houstians n'ehan d'ober d'in rebec'hou c'houero; goulenn a ran ouzoc'h pardon evit ar skouer fall am eus roet d'ar barrez ! »

— « Ya ! ya ! eme ar re-holl a yoa eno, ankounac'haat a reomp ho torfed, p'eo gwir e tiskouezit kement a geuz d'ezan. Dont a c'hellit ganeomp ! » An holl dud vat-se a ouele gant teneridigez.

An dall a deus eta betek harzou ar puns, hag e oe lakeat ar gorden d'ezan en e zorn.

E keit ha ma tremene an traou-ma meur a zen gouest a yoa diskennet er puns betek ar skeuden. Houma, a drugare Doue, n'oa ket torret, n'oa ket zoken pistiget an disterra. Ha setu staget mat ar c'herden outi. Sevel a reas goustadik epad ma kane ar barresioniz Litanion ar Werc'hez. Al labour a yeas mat tre betek penn, ha ne zigouezas ket an disterra droug gant den ebet.

Pebeuz levezeg a oe er c'halonou pa oe gwelet ar skeuden venniget o tont er meaz ! Eur youc'haden koulskoude a droc'has war ar re-all hag a reas d'ezo tevel. An dall a yoa war bennou e zaoulin, astennet e zivrec'h, hag e lavare :

— « Gwelet a ran ! Gwelet a ran ! Gwelet a ran ! »

Ar bobl tud a redas betek ennan : n'eo ket e krede gwelet, hogen, gwelet eo a reas e gwirionez. Gwelet a reas, ha kenderc'hel a reas da welet; n'oe ket ezom a-c'houdevez da gregi en e zourn, heulia a reas ar brosesion a zigase skeuden venniget ar Werc'hez d'ar gear.

Houma a oe lakeat adarre war an aoter, el leac'h m'edo arak an dispac'h. An hini eurus a yoa bet pareet gant ar Werc'hez, hag en doa roet dourn eun nebeut bloaveziou kentoc'h da zeurel he skeuden d'an traon, a oe unan eus ar re a boanias ar muia da lakaat anezi en he lec'h kenta.

Beva reas c'hoaz meur a vloavez goude an drama, ha keit ha ma vevas n'ehanas da veuli ha da embann trugaiezh an Itron-Varia.

PLUENZIR.

EUR ZELL TRO

Ped gwech n'hon deus ket aman savet hon mouez enep d'al lezennou fall a wash hon Bro !

Ped gwech n'hon deus ket laret e oa gwerzet ar c'houenchou en gonid p'otred ar Gouarnamant; e oa laeret menech ha leanezed evit pinvidikad mevel ha mignoned ar Frannasoned; e oa diframmet o fedennou digant an Anaon evit prena kestell d'ar brini-ze a hanver en gallek liquidateurs, da laret eo ar re karget da arc'hanti madou, an arc'hanterien.

Unan anezhanvet Lecouturier — gwechall paour-Job. — karget da werza kouent ha peadra ar Chartreuzed, a zo o paouez prenan en Pariz evitan e-unan, mar plij, eul leve kaer p'aeet gantan 900.000 lur ?

Nao-c'hant mil lur !... Laka kenvroiz ker, eo

brao bezan arc'hanter, hag e welomp reiz breman troiou kam Alanig ar Gouarnamant !

Enpad an emglask (enquête) groet war goulenn an aotrou Provost de Launay diwar-benn gwerzidigez ar c'houenchou ha peadra ar venec'h, hon Senedour kalonek an ens dizoloet ha diskuilhet eur Vreurezh savet gant gwerzerien ar madou-ze evit lodenni etreze arc'hant ar c'houenchou gwerzet.

Er vreurezh-man e oa seiz a dud : daou avokat, daou avoue, tri arc'hanter hag eun noter. Tud ar vreurezh en em vode gwech en ti unan, gwech en ti egile ha, goude eur pred mad, e vije neuze roet e lodenni da bep-hini. Ar Breureziou menech ha leanezed a zo difennet, mes ar Breureziou laeron a zo, herve, aotreet ha harpet gant ar Gouarnamant !

N'eo ket hep digare, elec'h gonit, e renkfomp c'hoaz dic'haoui diwar hon godel, evel just, 3 million 810 mil lur ! pegwir diwar 115 kouent gwerzet n'ez eus bet savet nemet 190.000 lur, da baez ar 1 million prestet gant ar Gouarnamant ovis ober frejouiou kentan gwerzidigez an treo laeret.

Ne gav ket d'ac'h, ma zud kez, penoz gant an arc'hanterien emañ pellik Yan diouz e gazek ?

MILI...

War don : Gouenili tremeniad

I

War zioulder eun noz-hanv
Eun ezennig skanv, skanv,
Flour a dremene ;
Ma-unan em c'hamprig,
E-tal ma fenestrig,
Ma a huanvree...

Pa glevis o sevel,
Douget war an avel.
Eun diskân kaer, kaer ;
D'e chilaou e chomis,
War ma fe, ne glevis,
Mouezig ken tener !

Ma c'halon a dride,
Ar vouez koant a gane,
Ar C'houeh, Breiz-Izel ;
Ganti hon bro garet
A vije luskellet,
Doue en he c'havel.

C'hoant am oa da c'houzout
Hag ive d'anveout
Parc'hien ar vouezig,
Hag eus ma c'hamprig kerkent
E teuis war an hent
Da glask an eostig.

Arabad ober trouz,
Skwemp, skwemp eo al lapouz,
Eme tud an ti ;
'Bez sioul, mar karez
Klevet henoaz e vouez,
Arc'hoaz n'he c'hlevi...

Hag e chomis eno,
Kluchet war an treuzou,
Didrous, dilavar ;
Ar vouez drant a gase
A draouien da vene
Kanaouen dispar !

E-UNAN.....

Yan a oa e galon trist ha doaniet er pardaez-ze...

T'envall e benn, e tizroe e-unan, gant an hent bras, eus gar L... da Drezelen, e barrez.

Skwizet gant eun aradeg a oa bet war an deiz ha muioc'h c'hoaz glac'haret gant eun disparti poanuis meurbed, Yan na oa ket, er pardaez-ze, ken meur ha kustum. Bale rea evel eun den bet skoet gant eur barrad klenned ha nevez pare, beac'h d'ezan o teurel an eil troad araok egile. Skwiz a galon muioc'h c'hoaz eged a gorf, Yan na daole pled ebet ouz an traou a oa endro d'ezan, nag ouz an arne pounner a oa azioch e benn hag a bromete kurun ha dour abarz pell...

An avel o voundal e beg ar gwez bras, a luskelle, gant e vouez velkonius, glac'h ar den yaouank evel eun hunvre o nijal...

Ya, Yan a oa e galon skwisoc'h c'hoaz eged e gorf, rak edo o paouez ambrouk d'ar gar ha lavaret « kenavo », evit pell amzer, marteze, d'eur mignon mat ha karantezus hag a oa bet e wella kelennet epad an nebeut amzer eun doa tremenet en e gichen.

Hennez a oa eur gwir vignon, an aotrou abad Breton, person Trezelen, ha kaset breman d'eur barrez-kollet er penn pella eus an Eskopti.

An aotrou Breton en doa darevet, peur'hreat, eunet deskadurez, kelennadurez ha barn an den yaouank, bet distreset gant ar c'hentelion resevet er skolion kristen, mes divrezouek, ha goude-ze gant lennadegou al levriou hag eo eürus ar re n'o deus morse klevet meneg anezo, na gwelet o liou...

Sklerijennet en doa, ar pastor mat, spered eün Yan, diskwezet d'ezan ar Wirionez, e dennet diouz hent ar Gaou evit e lakat en hini ar Gwir, dilezet, siouaz, gant kalz hizio...

Desket en doa d'ezan karet ar C'hist, mont en e drubuilhou d'en em erbedi ouz e galon madelezus, ha da glask di ar gwir frealzidigez ha na vez kavet e nep leac'h-all, ar frealzidigez hag a zo red alies d'ar re en em ro korf hag ene da zifenn ar Gwir.

Ar mignon-ze en doa ouспен roet da c'houzout da gerent Yan pegen berwelet e vijert oc'h ober eus o mab eun den a vureo, eun diskraber-paper, mat da netra. Great en doa d'an den yaouank dougen karantez d'an Douar, da zouar hegar Breiz-Izel, disprizet kement gant kalz, ha great d'ezan en em staga ouz an douar-ze o doa labourret a rum da rum e dud koz arozan. Diskwezet en doa da Yan pegen kaer ez eo ar vicher a labourer-douar ha lavaret d'ezan n'ez eus den dishualoc'h eged an tirier breizad...

A drugarez d'an aotrou Breton, Yan na oa ket dent da veza henvel ouz ar bötred yaouank, an dilezerien-holl; chomet e oa en e vro da zifenn tachen ar Gwir, troad-ouz-troad, ouz doktored ar Gaou, ha da c'hounit douar warno, ma vije gallet.

Ar beleg breizad n'en doa ket great hepken eus Yan mignon an Douar, great en doa anezan eun abostol, abostol Breiz, difennour broadelez ar vro breizad, difennour Spered Breiz.

Ha Yan a golle ar mignon-ze, hag a oa bet evitan, hed ar wech, evel eun tad! Pebez koll! Ne vije mui aze breman, e kichen e di, da rei d'ezan aliou ha kuzulion mat.

Epad m'en em roe evelse d'an dristidigez, an arne a oa gwaseat: al luc'hed a sklerijenne an hent goloet a wez, ar gurun a groze a zioch e benn, ha beradou pounner a c'hlaou goueze war boultren an hent pe a zivere war diouiskoaz ar Breizad yaouank diouz beg ar gwez.

Yan en doe evel aon, aon rak an noz tenval a deue a lammou bras, aon rak an tan-luc'hed a sklerijenne ato, hep an amzer, an noz dindan ar gwez uhel ha deilhennet, aon rak ar gurun a drouze muioc'h-mui hag a zeblante tostât ouz an den yaouank...

An aon a lakeas anezan da gerzet buhannoc'h, awechou, zoken, da redek dindan ar gwez tenval, ar gwez heolac'h kuzet e-kreiz an noz tenval-zac'h.

Eur wech m'en doa kwiteat an hent goloet a wez hag e ziwalte eun tam diouz an amzer fall, ar glao a gouezas a flao warnezan evel tenlet gant barazou... Eur fourrad avel fall a lakeas ar glao da zont kement a-gas ouz e zremm, ma vennas beza dallet.

Evelato, en despet d'ar gurun, d'al luc'hed, d'an avel diroll ha d'ar glao, Yan a oa savet prestik war gribenn eur roz, hag achane e c'helle gwelet tour-iliz parrez Trezelen. Ar vourc'h a oa siouli p'en em gavas enni; den na oa war vale hag an holl goulaouiou a oa lazet en tiez.

Mont a reas d'e di da glask e wele, ha goude eur bedennig a galon da Zoue, ec'h en em roas d'ar c'housked, torret ma 'z oa e izili gant ar skwizder hag ar boan-spered.

Antronoz, d'ar heure, ec'h en em roas adarre d'al labour pemdeziek, red d'ezan evit tenna eus an Douar ar magadur dleet d'ar c'horf...

Labourat a ranke e-mesk ar bobl, evit gounit peadra da veza, da c'hedal ma c'hallfe labourat ar bobl-se evit he sklerijenna, he lakât en hent ar Gwir, he drei war draou Breiz, evel m'en doa goulennet outan ar person karet araok kwitât ar barrez.

E-unan e vije o staga gant al labour-ze; mes, dre e gundu direbech, ne zalefe ket, a grede da vihana, da zacha pôtrez yaouank-all d'e heul, da zaouhanteri gantan e labour, da gleuza an Ero breizad.

Allas! ar paour kez Yan n'ema ket prest da 'n eur gaout er penn-all c'hoaz, rak an Ero breizad a zo tenn da gleuza!

J. DIRLEM.

DISMANTR PARIZ

Aotrou Rener,

Lennet am eus an diougan eus maro impalaer ar Prus, en niveren 5 a viz gouere.

N'hallan ket chom hep respont d'ac'h war gement-se. Kredet hardi, pa dommo d'ar Prus, ar Frans a c'houezo.

A amzer da amzer, aboue 28 vla, em eus lennet tri diougan diwarbenn ar Frans, herve an treo a dremen en hon amzer. Daoust ne oant ket just an eil evel egile, en em glevent koulskoude war ar memes tra.

An tri diougan-ze n'o deus groet nemet tremen dirakon, bet roet d'in da lenn, mes ne oant ket d'in.

Savet am eus eur werz diwarne war eul levr, etouez kalz a reo-all, evit derc'hel ar sonj divezatoc'h eus an treo tremenet.

Kas a ran ar werz-man da voulan, pe da lezel hep ober.

Ar werz-man, hag an diougan 5 a c'houere, a zo akord war ar brezel a dle sevel etre ar Prus hag ar Frans, herve an diouganou, rak an diou vro-vras a 'n em drailho, a 'n em rivino dre gwalen Doue, rak an eil hag eben eus an diou bobl-ze a 'n em zav enep da Zoue ha d'e lezen. Ar Frans ouzomp mat petra 'ra; ar Prus a zo protestant hag ouспен, e wask kristenien ar Pologn en eur feson didrue.

Pa vezo bar ar muzul, Doue a gastizo, Ha neuze an diou bobl, siouaz, a c'houzanvo.

Koulskoude, ar Prus, evel trec'hour, a dle ar-rout en Paris.

Neuze Bretoned, marteze, evel int tud a galon, gwel gante koll o bu evel lezel Pariz gant ar Brusianed, a dremeno dre ar « Metropolitain, » ha dre ma tremenfont dre ger, e lakfont ar poultre

hag an « dinamit » da zismantr an diou arme, ha pep tra-all da heul. Setu eta an aotrou Doue o lakat an diou vro vras da 'n em rivinan, gwalen a gasti evit o fec'hejon.

Plijet gant Doue trei ar walen a gasti diwar an diou bobl reuzedik, ha lakat ar peuc'h kristen da ren dre oll!

Hen goulen a ran dre hano ha maro hon Zalver Jezuz, dre skoazel ar Werc'hez Vari, an Oll-zent hag an oll éle.

Julvan GODEST.

GWERZ NEVE WAR DISMANTR KER BARIZ

War don : Ker Is.

M'ho ped, Tad, Mab ha Spered glan,
Laket em geno komzou tan,
Reit d'am spered gwir sklerijen
Da ziskleria d'ar Fransijen

Ar gwalenriou 'zo diouganet,
War Bariz, war Frans asuret,
Ha da gelen pobl Frans ive
Da zilezel o gwall-vue.

Ma c'halon a zo trubuilhet,
Ha ma spered a zo poaniet,
O laret dre Frans d'am breudeur
'Zo stignet warno eur gwall-eur,

Eus a-beurz an aotrou Doue,
Holl-c'halloudek, en gwirione,
Dre ma reont brezel d'ezan,
Hag en pep giz hen disprizan.

Ker Bariz, 'vel gwejal ker Iz,
Gant an dizurzou a zo trist:
Ker Iz dre vor 'veuas buhan,
Paris a ve bouet en tan.

Doue 'n eus ar Frans gourdroutzet,
Dre m'eo gant ar bobl disprizet;
Kalz a dilez e wir lezen,
Ha gwalgas e zivijerien.

Herve 'n diouganou 'm eus lennet,
Ker Bariz a vo distrujet,
Rak pobl ar Frans, en gwirione,
'Deus groet dispriz vras eus Doue.

Mar 'm eus lennet diouganou gaou,
Me lavar eun all, a vo daou,
Biskoaz diougan gwir n'eo chomet,
Hep ma ve groet 'pez 'zo laret.

Eus lein an nenvou 'neus laret:
« Pariz, te a vo dismantr !
Ma disprizet a teus, ker-veur,
Warnout-te e koueo gwall-eur.

'Balamour d'it, pobl Frans ive
Vo glac'haret, en gwirione,
Kalz a c'houzanvo ar maro,
Ha dre oll e vo trubuilho.

Da vugale, ar Fransijen,
A bep lec'h a deuy d'az tifen;
Nemet tud koz ha tud dister,
Ne vezo lezet 'barz ar ger.

Neuze en kerz miz gouere,
Impalaer ar Prus 'zeny ive
War douar Frans gant e armo,
Pep tra war e hent a zrailho.

Koulskoude, an den lorc'hus-ze,
Na vo ket wel a gement-se,
Rök vo en Pariz digouezet,
Gant ar maro vo diskaret.

'N hini gemer e renadur,
Hennez en Pariz deuo zur,
Hag an trec'h a vezo gantan...
En miz eost e vo kement-man.

Neuze Pariz vo distrujet,
Herve 'n diougan, gant Bretoned;
Ma c'halon a zeu da zemplan,
O sonjal dismantr ar ger-man.

Ker Bariz a zo mengleuiet
Gant 'r metropolitain hanvet,
Dre hennez, herve an diougan,
'Vo laket dre Bariz an tan.

An de warlerc'h da noz,
Kaer an oa bet gortoz,
Gortoz an eostig.
An ezen a c'houee,
Ha me a hirvoud
Warlerc'h ar vouezig...

Siouaz ! ne dleen ken
He c'hlevet en draouien ;
Breizadez diboell !
A drok evarusted
Evit poaniou spered
Ar broiou pell, pell.

N'em oa ket he gwelet ;
Koant oa, lieve laret,
Mili he hano :
Hi a roas eun de
Kened ha karante
D'eun tam krak-aotro.

En ker, an durzunel,
Gant aon rak ar sparfel,
A hirvoud bemde...
Sonj he c'hanaouennou,
Peuc'h tener he c'hoajou
A wash hec'h iue !

En he Bro, koulskoude,
E ve karet ive
Ar bleuniou lili,
Pa daolont o c'houez vad
El liorz eur Breizad...
O paourkez Mili !

AR YEODET.

AN TI DÉVET

Ar pezh a ra bean dister doare an den war an douar eo ma renk pep rum tud prenan o skiant.

An tad a lez gant e vab ar madou an eve prenet epad e vue, mes ar skiant an eve prenet a ya al loden vras anei gantan d'ar be. Pivudigez eun tiegez a hall kreski a rum da rum, eus an holl vadou danzeet gant pep-hini ane, mes he skiant na gresk ket ken prim. Kalz anei a ya gant pep rum d'ar be, ha na dol ket a frouez en spered ar mibien.

N'eus forz, eun dra bennak a chom ; rak, anez se, ar bed na gerfe ket war rök : ma eo red kelen pep den en e vugaleaj, muioc'h akwit e ve, peurvuian, ar mab hag ar mab-bihan evit ne ve bet an tad hag an tad-koz.

Penôs eta e welomp-ni hirie ar c'hontrol beo ? 'Vit pezh a zell ar skiant-prenan, skiant ar vue, elec'h mont pelloc'h war rök 'vit ne oa et o zadou, ar vugale a gerz a-souz ; elec'h heuilh war ar roudou merket en o rök, eo stouvan ane a reont ; elec'h derc'hel war an ero toullat gant o zadou, eo dispen anean a reont. N'eo mat evite netra eus ar pezh a oa gwechall ; eur wenojen-all a fell d'e pleustri. Ar skiant prenet gant o zud a zo boed trenket evite, mat hepken da dol er porz.

Evelse, tonellet gant an deskadurez helpennet a zo breman, ar yaouankiz an deneran a deu 'vel da zrouk-kredi d'ar pezh a oa bet, betek breman, diaze ar vue.

Eur pôtr trizek via a lare d'in, n'eus ket pell :
— C'houi a lar, emean, 'zo eun Doue ; mes ar skolaer a lar n'eus ket, ha me n'ouzon piou da gredi.

— Komzou evellen a zo komzou pounner, emeon, en geno eur c'hanfard eveldout. Mes chileo, true am eus ouzit, hag am eus c'hoant da harz ac'hanout da zemplan war an hent mat. Respont d'in eta war gement-man. Eur wech, eur c'hamarad d'in a oa o vale er c'hoad, pa digoueas gantan eun den hag a laras d'ean evellen : Er c'hoad-man 'zo evned eleiz ! — Ya, eme ma c'hamarad, ha kanan kaer a reont ! — Kanan ? eme an den-all-ze ; me lar kentoc'h int mut, kement hini 'zo ane ! Ma c'hamarad a oe souezet bras, mes dont a reas da gompren : an den-ze a oa bouzar-kloc'h, hag a lare ne gane ket an evned, war digare n'o c'hleve ket.

Pa lavar eun den digristen, mestr-skol pe all, n'eus ket a Zoue, eo hevel-poch ouz an den bouzar ; lavaret a ra n'eus ket a Zoue, war digare ne wel na ne zant anean, rak dife eo ; mes an den a fe a wel hag a zant Doue.

An den a heuilh ar relijion 'vel 'zo dleet, a ya d'an oferen, a govesa hag a goumni gant evez ha gant preder, an den-ze e tigor en e greiz *eul lagad hag a wel Doue* ; an hini, avat, a zo direlijion, pe an hini a heuilh e relijion gant eur galon yeh ha dizeblant, hennez eo kloz al lagad-se en e greiz, hag ar pezh a wel e amezeg kristen, hen na wel ket ; setu perak e teu da laret : N'eus ket a Zoue !

Mes pa glevet eun dall o laret : « N'eus ket a heol ! n'eus ket a de ! N'eus nemet tenvalijen war an douar ! » petra ret-hu ? Ober eur c'hruz d'ho tiousskoa : « Paour kez den ! emeoc'h. Evitan zur n'eus na heol na de, p'eo gwir eo dall ! » Hag ho pe true outan. True 'zo dleet kaout ive ouz ar re a lavar : « N'eus ket a Zoue ; rak diskoue a reont dre eno n'o deus ket sklerijen ar fe, hag ez int dall. Biskoaz kristen mat na nac'has Doue, rak n'eus kristen mat ebet ma n'an eus ar fe, da laret eo, *ma ne wel Doue*.

Respont eta, mabig, da biou bennak a lavarfe d'it n'eus ket a Zoue :

« Klask anean, hag hen kavi, red eo hen klask rök hen kaout. »

Intentet mat a teus ar pezh am eus lavaret d'it ?

— Ya, eme ar pôtr yaouank. Breman, me oar petra 'm o da respont, ha petra 'm o d'ober !

Setu eno penôs eo red hirie had-kelen ar yaouankiz, 'vel eo red hadsevel, *adalek traou*, eun ti bet devet.

Eur c'hoz Tregeriad.

GWENGAMP

SKOL VREZONEK

'Vit lenn, disklerian ha laret dre'n envor.

1. priz : Paul Derrien, eus Plouaret.
2. priz : Roger Le Noan, eus Panvrit ha Joseph Morice, eus Sant-Agathon.

1. Accessit : Jean-Baptiste Boudiot, eus Moustéras ha Yves-Marie Cadec, eus Benac'h.
2. Accessit : Clément Monfort, eus Sant-Agathon ha Yves-Marie Nicolas, eus Louargat.
3. Accessit : Pierre Bourdonnec, eur ar C'houer-c'hed ha Stanislas Pastol, eus Louargat.
4. Accessit : Ambroise Stéphan, eus Plouaret ha Yves Mézec, eus Lanvollon.

'Vit skrivan ha trei brezoneg en galleg.

1. Priz : Jean-Baptiste Boudiot ha Yves-Marie Cadec.
2. Priz : Yves-Marie Nicolas.
1. Accessit : Jean Derrien ha Clément Monfort.
2. Accessit : Armand Geffroy, eus Péderneq ha Yves Richard, eus Plouha.
3. Accessit : Victor Ménez, eus Trabrian ha Louis Pastol, eus Sant-Eler.
4. Accessit : Joseph Allain, eus Binic ha Augustin Toupin, eus Kerity.

'Vit ober skrijou en brezoneg.

Priz : Louis Bachelet, eus Plougonver.

Ar brezoneg n'eu deus ket harzet ar bôtred yaouank-man da gaout prijou 'vit ar galleg.

Da gentan, ar re ane a oa da dremen ar « baccalaureat » a zo bet digemeret holl. A hent-all, Yves-Marie Nicolas, eus Louargat, an eus bet ar priz « excellence » en e glast. Re-all, 'vel Josef Morice, breur hon mignon Pen-Dero, eus Sant-Agathon, a zo bet hanvet seiz gwech, Paul Derrien, c'houec'h gwech, Yves-Marie Cadec, pemp gwech, Yves Mézec, pemp gwech.

Louis Pastol an eus bet ar priz enor bras ha tri priz-all. Pierre Bourdonnec an eus bet ar priz

« excellence » Stanislas Pastol 'zo bet hanvet eiz gwech.

Gourc'hemennou eta da skolaerien ha d'o mestr, an otro Clerc. Kentan bla vo, e vont c'hoaz nive-rusoc'h, ha bepred war startat en o c'hreden vreten. Dre eno, muioc'h 'vit dre hent-all ebet, e tenio poell ha pouez en o c'huden, hag ouспен prijou hag enorion e c'houefont ar skiant bevan.

KELEIER EUS AR VBO

TREGER-GOULO-KERNE-URHEL

BOULVRIAC. — Pardon vourc'h. — Endro da Weingamp, 'nep lec'h, n'eus ket eur pardon ken brudet ha ken kaer ha pardon vourc'h, pardon sant Briak. Gwechall e oa brudetoc'h c'hoaz pac'h ae klanvourien skoet gant an drouk-sant da glask gantan o fare. Ar glanvourien-ze e oa souezus o gwelet hag o c'hlevet. Dal ma lakent o zroad war douar parouz Boulvriak, en em lakent da yudal ha da c'hervel sant Briak. En iliz, epad ar gourreo, e skrifent a-houez penn, ha pemp pe c'houec'h den kalet na vije ket re 'vit o derc'hel.

Mes pa vijent bet oc'h avieli hag oc'h ober tro be ar zant, e ézetae d'e hag awechou e parent.

Breman, aboue eun toullad blaveziou, ne weler ken a glanvoutien, klanvourien ar c'horf, da vitanan, o lont da gaout sant Briak ; mes bepred e chom nerzus fe ar belined en e genver, ha bepred e turedont d'e bedi ken niverus ha biskoaz.

Disadorn, disul, dilun 'zo tremenet e harz treid ar zant tud a bep tereouer hag a zo leun a fianc er zant mat enoret bone keit 'zo en Boulvriak.

Ar bla-man eo bet kresket c'hoaz an enorion rentet d'ean. 'Vit o wech kenta, an otro person a felle d'ean lakat sant Briak a-du gantan, ha gret an eus, hag e belined. Biskoaz n'am oa gwelet tantad ken kaer ha disadorn, da dek eur noz, sklerijennet ar bourk gant eun niver a c'holeier, darn eus an tier hevel ouz oteriou savet tro-dro d'al leur-gêr.

An otro Riguier, unan eus kureed koz Boulvriak, unan eus ar re a zo ar gwellan zonz dioute emesk an dud, a oa deut d'ober ar pardon. Komz a reas d'ar zul en oferen-bred. Komzou mat ha brezoneg mat, daou dra hag a ra plijadur da galon pep Breton, a glevas an de-se, dreist c'hoaz d'an deioù-all, tudou Boulvriak. Bean deus ti dra en o farouz hag a ra d'e kalz a enor d'e dirak ar parouzion-all : eur Vreuzie bagale Mari, diou skol gristen hag eun ti 'vit dastum ha kelen ar yaouankiz hag al labourerien. An otro Riguier, 'vel eur barz mac'h e, a gavas ar braoan tu da laret kement-man. 'Vel eur boked an dri liou, emean, e kinniget d'ho sant Patrou, ho Breuzie merc'hed yaouank warni liou gwenn ar gwerc'hted, ho kec'h-labour, warnan liou ru ar stourm hag ar reuz ho skoliou kristen, warnan liou glas an esperans.

Ar gousperou a oa da der eur, hag ar prosision. Siouaz d'in, n'hallis ket chom d'o gwelet ; mes en eur dizrei d'ar gêr, e sonjen, ma spered gant ar zant hag e bardon : Da vla, me dizro adarre, da welet sant Briak en e c'hloar, d'hen pedi ha d'hen enori asambles gant Bretoned vat Boulvriak.

Eur Pelerin.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANTHOU

16 real ar bleaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar brolou estren hag evit ar Broio kelteek.

RENERDOEN :

E. AR MOAL (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMMANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aez.

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GAZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar galleg ez alio a Vreiz.
FURNEZ AN GAZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma vo trec'hat,
Ouspenn ar Vez, e ve Pac'he d'
Mour.

Roll Rakprenerien " Bleunioù Yaouankiz "

Dastumaden sonioù ha gwerzioù
gant AR YEODET

An Aotroue :

An otro Besco, person Larnen.	1
Ar barz Ab-Alor, rener an <i>Arvor</i> , Gwened.	3
An abad Ar Gall, person Lescouet-Gouarec.	1
An dimezel Charrau, Kervaria.	1
An abad-Gouez, kure Plevin.	1
C. ... G.	1
Ar barz Hollsent Ar Garrec, Plonigneo.	1
An abad Cosson, person Sant-Nikolas-ar-Pelem.	1
Delafargue, mare'hadour-gwin, Lanvollon.	1
Cazin d'Honnethun, maer Glomel.	1
An abad Bourdellez, kure Lannou.	1
An abad Ar Goff, aluzenner, Pontivy.	1
An dimezel J.-M. Tarlier, Ploubezr.	1
An abad Cocquen, person Sant-Agathon.	1
An otro chaloni Ollivier, person Boulbriak.	3
An abad Coent, kure Boulbriak.	1

BREURIEZ AR BREZONEG

Breuriez ar Brezoneg a zo en sonj ober hep dale eur c'hrog-all etre ar vugale o deus roet d'eil o hanoioù.

'Vit bean en Breuriez ar Brezoneg, pôtrek ha merc'hed n'o deus nemet kas *eiz real*, o *chomaj* hag o *kano*, gant ne voint ket muioc'h 'vit *pevar-zech vla*.

'Vit o eiz real, o devo ar *Groaz* peder bazen 'pad eur bla, eur c'haier ha lod er prijoù zavet gant Breuriez ar Brezoneg.

Gout a cer ive 'zo ter oferen laret hep bla evit bugale Breuriez ar Brezoneg ha 'vit ar vadobourcien; unan koulz Nedeleg, pa ve ganet ar *Magig Jezuz*, eun all kerz miz mae, en enor da zant Ervoan; eun all kerz miz est, en enor d'ar *Werc'hez Vari*.

Oferen miz est a vo lavaret al lun, 10 a viz est. Holl vugale Breuriez ar Brezoneg a bedomp da vont an de-se d'an oferen, pep-hini en e barrouz, ha da bedi ar *Werc'hez* an eil evit egile hag evit Breiz-Izel, o bro.

AR GWALL-DEODO

Setu aze eur wenn frailhet, flastret, divranket; ne chom diouti nemet he gwrio hag he c'horf, 'n he zav 'man evel eun ibilh laket en donar. Goulennit piou an eus he laket er stad-ze, hag e vo laret d'ac'h : « Hennez eo labour ar c'hurono; ar c'hurun an eus straket, hag a zo diskennet varni; breman ne welfer ken anei o kreski, ne welfer ken, en bago he branko torret, an deliou glas o sevel; ne welfer ken diudani o tisheolia, ar heajour skwiz diudani tomder an heol. Graet eo diouti; mouget eo ar vuez euni.

Ar c'hurun, na gwasat tra!

Ar c'hurun, gant e drouz, pouner ha spontus n'eo netra!

An ten, pa darz en lein an nenvo lenval, en amzer du, en oabl n'eo man en kichen an teodo fall!

Groump eur zell war hon bro; dre oll e welomp poan-spered ha trubuilh; den n'hall ken 'n em glevet, buez fall en tiegeziou, buez fall dre oll.

En distera eus ar paronziou e kavfet, mar 'z eus enne tri pe bevar di, eur gommer pe eun teod fall bennak, ha gant o c'hojo int gwest da lakat an dud da 'n em drailha ha da 'n em chakat.

Eus adalek ar heure betek an noz, o daoulagad a vo war heman, pe var hienhont; sellet a refont piz da helec'h ec'h aio;... eun tamm stam en o dorn, azezet en toull o dor, e figorfont eno o geno enpad an de; kement hini a dremenno, a vo sellet mat outan, ha diwar o skabel, ne veint ket a-bell alies o varn an den pe ar plac'h yaouank a dremen diudan o zello.

— Setu aze an eus feson fall! Setu aze an eus feson eur fripon hag eul lankon!

Setu aze o labour epad an de.

Pa dosta an 'abardae, Janed ha Marijan ac'h a, war digare ober eun tam baleaden, da ober eun tam zell en toull pep dor. Fanch ha Katel, nevez dimeet, na 'n em glevont keterfad; mont a refer betek o zi, selaoua refer ar pez a dremen, ha ma klevet eun drouz bennak, setu Katel ha Jakez laket war ar grouz, ne vo kavet neb lec'h daou evelte, ken fall ec'h int. Hi a ev hini krenv, hag hen a lard anei... War digare, marteze, ma vo bet eur gir pe daou etreze, evel ma vez alies memes etre an dud ar gwella, setu int kemeret evel tud eus ar falla... abalamour ma 'z eus 'n o c'hichen diou pe deir gommer, ered-wiber!

Setu eta Janed ha Marijan endro. Marianna ha Guillemet a zigonez gante war leuren ar bourk... Neuze, avad, ec'h a an teodo endro! Nag a geloioù nevez! Enon e vez staget tammo d'an oll war o chupen. Ne vefe ket a-walc'h eus ar gazeten-man evit moulla an neventio o deve klevet.

Hag ar person a zo oc'h ober e gest!... Ordinal e ve o kestal... hag ar c'hure ive!... Ar maer zoken, ma n'eo ket fraumason, ne vo kavet den falloec'h evitan... mar ga d'an oferen, ne vo ket mat da ruza gant ar boutou! Heman-all a zo laer! Hennez neuze a zo bet er seminer, n'eo tam gwelloc'h evit ar re-all; houman 'zo paour, hennez n'eo ket pinvidik.

Hag ar c'hojou-all a deu c'hoaz eus o geno, war gaer'at bepred, poan a ra ganin, n'halla ket o lakat aman, evit diskouel d'ec'h pegen lous eo geno eun darn zo; mes n'am eus ket a c'hoant d'ho lakat da ruia, lennerien ger. En-touez ar seurezed pilpave memes am eus anaveet unan bennak, ha pa c'halle noazout ouz unan bennak ne c'houte ket war he zol. N'eus netra muioc'h disprizus, evit gout e vez, dre zindan, unan bennak oc'h esa ober poan d'ec'h. Rak ma n'ho peus ket a galou a-walc'h da laret eun dra da eun den 'n e vizaj, roet peuc'h, rak n'oc'h netra. Ne blij ket d'in ar re a glask labourat dre zindan. Ar fraumasoned, a zo en pen hon bro a ra evelse; en hanv Doue, ne ret ket evelte.

Ar c'hurun da goueza var gement teod fall zo! Ra chomo o zeod hag o izili zounet oute, ma n'helfont ken noazout ouz o nesa! Evel ma lerer,

buhanoec'h e selaouer bepred ar fall evit ar vad, n'eus forz eus geno piou e teu.

Daoust hag-en, hen leret din, hag-en omp-ni aman, war an tam douar-man, evit euebi an eil ouz egile, evit ober poan ha dismegauz an eil d'egile, drouk-komz an eil eus egile?

Gwir eo penos eun darn eo houneuz o micher. Pa blij d'e, lezomp ane da veskan teilh; diwal-lomp, zoken, da veskan aneau re, betek gout e teufe dioutan re a c'houez fall. Koulskoude, evel ar medisin, n'hallomp ket tremen heb lakat hon biz war ar gouli, evit esa yac'hat anean, ha klask lakat eun tam plijadur er galon he deus gouveet pegen c'houero ha pegen poanios eo kojou an teodo fall.

Petra int, peurvuis? Tud ha n'o deve bet biskoaz netra a vat nemet o zeod, meos hanter-amzer, aliesoc'h en toulleou an hent bras eget er ger, aliesoc'h en hostalicioù, oc'h eva bannac'hou, evit gant o bugale; 'n o c'hozui, mez o bro ha mez o bugale; en o yaouankiz, petra veint bet? Pennou skanv hag alies pejou fall.

Eus an hostalicioù, peurvuis, eo e teu ar c'hojou-ze. Kement o ane breman, ma 'maint an eil en droug ouz eben, memez tra evel ki ha kaz. Eno eo e kever an dud dizoursi, eno e kevfet li-perten ha liperezed gwer, ha pa vez eur bannac'h hini krenv dindan o fri, ne zellont ket kaer ouz brud vad o nesan.

A teodo fall, ma vije paet pep hini er bed-man herve e labour, pell 'zo ar c'hurun a dije bean bruzunet ac'hanoc'h.

Kent komz ha drouk-komz eus an dud yaouank, sellet eun tam ouz ho puez tremenet; gwelet eun tam pegen fur e oac'h en ho yaouankiz? Ha gwelloc'h e oac'h-hu evit ar re war bere ho peus c'hoant da vabouzi?

Ha goude bean groet eur zell war ho puez dremenet, e larfet ganin ne oac'h tam gwelloc'h evit an dud dimeet, an dud yaouank, a c'hoantaet labean, alies war an distera digare. Peurvuis, roud teod ar re falla eo a vez gwelet dre-oll, da genta; falla stoliken a zo a gavo dre-oll sion en holl.

Eflam AN HENORET.

GOUEL PRIJOÙ PLIJIDI

Mar zo eun dra hag a ra plijadur e-kreiz holl bueou fall an amzer-man, eo gwelet ar re yaouank o sevel yac'h ha zounn evel ar plant en eur park mat. Da vihanan, ar vugale-man, pa voint en oad, na voint ket hanvel ouz al loden vras eus an dud a dregout, daou-ugent, hanter-kant vla, eman hirie en o dorn landennoù ar c'harr. Ne voint ket genaouien seurt a weler dre vagad, leun a zoujanz evit pep tra divalo, dreist-holl ma teu a-zivrez bro, dizeblant, avat, en kenver pep tra vat ha kaer, dreist-oll, ma 'z eo eus o bro; ne voint ket speredjou herwel seurt gant ar re na gavont man dreist d'eur yalc'had arc'hant; ne voint ket tud re zod gant o c'hof hag a gont etouez o zolioù kaer bean evet, dreist gont, gwini-ardant ha jistr; ne voint ket touerien-Doue, 'vel an dud zavet fall ha ne deus eus o geno nemet malloziou ha sakreou.

Nan, ar vugale-man, pa voint deut en oad, pa vo deut o zro, evel eman breman hini o zad, da

zougen bec'h ar vue war o diousoa, ar re-man a vo trec'h d'o zannu ; ne voint ket gwasket ganton, ne goufent ket dindanan.

Evelse e soujer, o welet gouelioù seurt oa bet diriou en Plijidi. Mes an tadon hag ar mammou, dreist-oll, a dle bean evurus ! Diez a-walc'h eo d'eun tad, d'eur vamm, daoust pegement e talc'h-fent da ze, miret o bugale ouz pep drouk, ha derc'hel ane war hent an honestiz. An honestiz na drempred ken an henchoù bras ; ne vale nemet dre an henchoù moan hag ar gwenojennou ; adreuz parkou eo red d'an den ober hirie e zilvidigez ; an henchoù bras, henchoù ar bed, a zo sparlet ha leun a bechoù. An tad hag ar vamm n'int ket eta barrek a-walc'h, da vesa o bugale ha da gelen ane ; red 'zo ouспен, ar mestr-skol hag ar beleg ; mestr-skol, tad ha beleg o 'n em glevet o zri a zo barrek neuze d'ober labour a zoare endro d'ar vugale.

Siousaz, kazi en holl barouziou, an emgleo-ze 'zo torret. Pe ar gerent, pe ar mestr-skol a zo kiriek n'haller ken sevel lugale 'vel 'zo dleet, an eil pe egile o tizober alies ar pez a ra ar beleg. Peurvuiañ ar mestr-skol a zispen labour ar beleg wardro d'ar vugale, hag ar gerent na... zoursiont ket.

En Plijidi, avat, n'eman ket kont evelse. En Plijidi zo eur skol gristen, bean 'zo beleien aketus, hag an tadon ha mammou, o vean fur, na stourmont ket ouz ar beleg nag ouz ar skolaerezed. Dre-ze, e kaver hag e weler en Plijidi ar pez na weler ket ha na gaver ket el lec'h-all.

Klasket ha furchet e vo bet pell amzer, kent ma vo kavet bugale, merc'hed ha potred, da 'n em ziskoue, en eur gouel, ken akwit hag ar re-man.

Mes pelec'h vo kavet ive unvaniez hag intent ken kaer etre mestrezed-skol, tadon ha beleien ?

Daou ouel, koulz lavaret, a oa bet diriou ; unan, da dek eur eus ar beure, egile da diou eur hanter d'abarde. Etreze o daou e padjont tost da c'houec'h eur ; mes evite da vean padet pell, ne oant ket re hirr. Hini ar bôtred a oe diouz ar beure ; hini ar merc'hed diouz an abarde. Prijou Breuziez ar Brezoneg a oe roet d'ar beure d'ar bôtred loreet 'barz ar c'hoagad diwean c'houezek ane a oa eus Plijidi hag a c'honeas c'houec'h priz hag eiz accessit.

Ar pez « Doue ha ma Bro » a oe c'hoariet gant : Emmanuel Peillet (Mérialec). Btiac (Yves Thépant). Goneri (Théophile Gestin). Yvonig (Denis Golven).

o zri bugale da Vériadec :

Gwenole (Yves Bombonyl). Moris (Jean-Baptiste Piver). Eflam (Emile Pierre). Jobig (Joseph Gestin).

Pelloc'h 'vo kavet, skrivet gant Ar Yeodet, ar pez 'zo mat lavaret diwar gement-man ; koulskoude, digonsians e vijen mar tremenfes hep rei ma lod a veulodi d'ar vugale-man, ha d'unan ane, Briac, 'vit ar pojou diwean a lavaras er pez. Keun a oa o welet achi gante da c'hoari, dreist-oll, pa dennjont o gwiskamanchou breton. Arôk, man nemet o gwelet a re vad d'ar galon, ken brao stummet evel ma oant gant o zokou rubanet hag o clupennou eus Pont-n'abat, voulouzennou yarne endro d'o c'herc'hien.

Pegen divalo eo hon gwiskamanchou e kichen re Leoniz !

D'abarde, oa tro ar merc'hed. Muioch a dud a oa 'vit diouz ar beure, tud betek eus Rostren ha beleien eus holl barouziou ar c'hanton. Bean oa otrone personed Boulvriak, Sant-Pever, Kerpert, Grol, Magor, Sant-Drien, kuread Kerpert, ar c'houerc'hed, ha tri eus skrivagnerien Kroac ar Vretoned, Pen-Dero, eus Sant-Agathon, unan ane. Ar rener ha joa an otro Clerc, mestr skol vrezonek kolaj Gwengamp. An otro mer a oa en e gichen, hag holl tadou ha mammou Plijidi a

oa, koulz lavaret, dastumet en porz ar skol gristen. An heol a bosc'he hag ar porz a oa evel eur forn c'horet ; mes den nan ije goullet klemm na souzan, rak mar oa 'vit ar c'horf eun tam poan da c'houzanv, ar spered hag ar galon o devoa da danva eno eur pred eus ar gwellañ.

Ar merc'hed bihan a gवास sonjou hag a c'hoasias eur pezh gallek ha *Merc'herenti santez Thekla*.

O c'hozmou, koulz hag o doare a blijas meur-bet da gement a oa o sellet. Plijadur evit an daoulagad, gant ar gwiskamanchou aour o lufran ; plijadur 'vit ar spered gant ar mennoziou kaer diskleriet c'houek.

Nag en galleg nag en brezoneg, ne oa o c'hentel da zeski gant ar merc'hed, na petra o devoa d'ober, na dre belec'h o devoa da dremen.

Breman, e tlefen lakat prezegen ar prezidant ; mes re a dalvoudegez he deus 'vit bean dispennet aman etre seiz pe eiz frazen ; ar zun a deu e vo kavet war ar gazeten eur berradur eus ar c'hozmou yac'h, skler ha reiz a lavaras an otro Clerc.

Ar gouel n'halle ket achui hep ma vije bet kanet eur zôn bennak gant ar varzed. Ar Yeodet a ganas eta *Chom en Breiz-Izel. Ar Meder hag ar zoudard kristen*, tri bez labour anaveet mat breman, ha digemeret gant an holl. Gant *Pen-Dero* e teuas *Mevel ar pilhaouer*, eun dra vad da digas ar yec'hed d'an dud klanv, dreist holl, pa ve lavaret gant Pen-Dero.

Dre eus ec'h achuas ar gouel ; mes an diave-zourien a lezas lod eus o c'halon en Plijidi. Da ouel santez Anna, o sonjal e oa had-c'hoariet ar pejou, lies a hiui an evoc'heun er ger, dre n'halle ket dizrei da gemer adarre e lod er blijadur hag el levenez.

DIR-NA-DOR.

Setu aman hanoioù ar merc'hed bihan o deus c'hoariet santez Thekla :

Theoclia, *man Thekla*, Marie Dagorn.
Thecla, Léonie Pourhiet.
Adelpha, Eugénie Dididollou.
Trisone, Philomène Le Bars.
Calina, e *servij Theoclia*, Marie Darrien.
Cétilie, e *servij Theoclia*, Zénaïde Hamon.
Zita, Maria Gestin.
Febronia, e *servij Thekla*, Rose Mèheut.

Herve ar c'helo a digoue ganimp, ar gouel disul a zo bet katz kaeroc'h c'hoaz 'vit an hini diriou. Bean oa eun niver a dud, betek eus Kerber, Boulvriak, Sant-Drien, Sant-Pever, hag all, hag eleiz a veleien hag a gloer yaouank.

Enor, hag enor bras da barouz Plijidi, d'he beleien, d'he skol gristen ! Ra droo an holl barouziou breton o zellou warni, ha ra deufont da heuilh he skouer ken kaer ha ken mat !

MES " LA GOUTTE " ? BIKEN !

Tôn : Sao, Breiz-Izel.

Seder e kerzen eun abardaez hanv,
O lonka ear yac'h ar meaziou,
Va spered, freskeat gant eur voren skanv,
A glevas eur strollad mouezion,
Tostik-tost d'in o tiskan laouen :
« Mes eva « la goutte » ? Ne rin birviken ! »

Eun elik Doue, d'eur voazien heol
O tiskouez kant liou e eskel,
A laras : « Brao eo beva en e reol,
Da zun kleier bruk Breiz-Izel !
Suu a ran c'hoaz mel al laun melen,
Mes suna « la goutte » ? Ne rin birviken !

Eur ric'hian flour a zavas eus eur bod
Da veuli an aotrou Doue,
Me eo an eus an tiaou gwella da lod :
Perlez arc'hant ar beure
A glukan drant ouz beg eun delieu.
Mes kluka « la goutte » ? Ne rin birviken !

Eun oanig sioul a gomzas evelhen :
Gant dudi vras eo ec'h ever

Er voaz a hiboud, o tout eus ar lemu,

Da bokat d'ar yeodet stener,
Na peger c'houek eo an eimen !
Mes kaout c'houek « la goutte » ? Ne rin bir-
viken !

Alan an ezen a hirvoudas kout :

Kouz an oabl ouz bet o kerc'hat,
Ha pep komouten a goulle drant,
Da derri sec'hed an trovad,
O kana : Selu glao ha glizien,
Mes banneou « la goutte » ? N'ho po birviken !

Meur a vouez-all a gleven tro-war-dro ;

Mes va diousoarn a stankis,
Ha gant ar vez evit tud vat va Bro,
E lec'his pell endra c'hellis,
O kas eur youc'h d'hekleo pep traoumien :
Mes eva « la goutte » na rin birviken !

Yan AR FLOCH.

SENTOMP

Perak em c'halon ar velkoni,

Da bep levenez a vez traoc'h ?
Perak ne ran nemet hirvoudi ?
War va spered pejak eur beac'h ?
— E pep koru-bro ne welan ken
Nemet kristenien laosk ha yen,
Nemet tud a dro kein d'o C'hrouer,
O tenna malloz war hon amzer.

E disheol ar gwez e tiskwizen,
Eun devez war geoni eur mean,
Eur labousig a ganas laouen,
Rak en e galon noz oa drean,
Goulen a ris outan raktal :
« Ne vez tam arne war da dal ?
Daoust hag e-touez ar bobl askellet,
Ouz ar Mestr ne vez ket dizentet ? »

Gant e vouez flour, ar lapous kerkent :
« Pegen eurus n'oun ket em stad !
E mesk an dud ez eus re zizent ?
En hou touez-ni n'eus ket avad !
Kan a reomp drant d'an heol pa zav,
Pa ziskan an noz ni a dav,
Goude beza debret a-zevri,
Ar goan aozet gant Doue d'eomp-ni. »

Eur bann-haol o treuz ar skoultron,
A lavar d'in ouz va skleraat :
« Perak dizenti ouz an aotrou ?
Evidon ne ran ket avad !
War e gomz e kerzan bepred,
Oc'h hada buez war ar bed,
Hag ez in ken e c'hoarc'hemennou :
« Chom a-zao, ma reno ar Maro ! »

Gant an deliou kouezet ha breset
E klevan kaoz dindan va zroad :
« Perak eta e vez dizentet ?
Ni n'hon deus great biskoaz avad !
Deac'h e pouzemp eur begig glas ;
Skubet omp bet ; setu ni kras.
Mantrus eo, a zoolji marteze :
Lavar eo kaer pa 'z eo urz Doue. »

Em c'halon hadblennviet levenez,
Ez an warzu an iliz koz,
Tro-zro d'an tour e c'hournij elez,
O c'hdal peden ar c'hloc'h-noz,
Ha me d'ezo : « Ra blijoc'h kas
Ar goulenn-all-ma ganeoc'h c'hoaz :
Jezuz, hoc'h eus va c'haret kement,
Mirit ne vezin biken dizent. »

Yan AR FLOCH.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOURMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broiou estren hag evit ar Broio Keltiek.

RENERDOEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer aez

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar on Breiz.
FORNEZ AN GEIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar galleg ez sio a Vreiz.
FORNEZ AN GEIZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Poc'het!
M.L.M.

AR BARIZIANED ER VRO

Beuet eo hon bro gant ar Barizianed. En o zouez 'zo kalz a Vretoned o tout d'ar ger da welet o zud. Ar re-man a gustum re alies komz galleg er ger, evel en Pariz. Ni, da vihanan, komzomp oute brezoneg, ha lavaromp d'e: Eur Breton mat, pa deu d'ar ger a lez Pariz! (da laret eo, a lez eno galleg ha gwiskamant ha giziou diboell ar ger-ze). Bezomp Bretoned, da vihanan, en Breiz!

SKOLIOU KRISTEN O DEUS GRET BREZONEK

'vit ar prijou, ha pad ar bla.

PLIJIDI. — Er skol gristen eo bet c'hoariet gant ar bôtrez vihan *Doue ha ma Bro*, pe brezonek gant an otro Goguic, person Pleuveur. Gant ar merc'hed bihan eo bet c'hoariet *Merzerenti santez Tehla*. Kanet 'zo bet soniou brezonek, *Bro goz ma Zadou*, *Maout ar gô ha maout ar Gull*, hag all.

TREGROM. — Er skol gristen eo bet c'hoariet gant ar merc'hed bihan, *santez Cecilia*, ha kanet soniou brezonek, *Kousk*, *Breiz-Izel*.

PLOUNEVEZ-KINTIN. — Er skol gristen eo bet c'hoariet *Tog Jani*, pezig fentus hag a skouer vat, savet evit merc'hed bihan.

Ma zo c'hoaz skolioù-all hag o deus impliet ar brezoneg gant gouel ar prijou, *Kroaz ar Vretoned* a vije evurus oc'h embann o hanoioù hag o rei d'e ar meulodi 'zo dleet.

A hent-all, bean 'zo ive skolioù kristen hag o deus 'pad ar bla, roet peurz, kalz pe nebeut, d'ar brezoneg 'barz ar studi.

Er penn ane, emañ Callac, Plijidi, Carnoet, Peurit, ha neuze Pleuveur-Bodou, Ploubêr, Boulvriak (pôtrez), Kervaria.

Marteze ec'h ankouaomp. Neuze 'ta, d'an holl skolioù kristen, koulz ar re a anaveomp 'vel ar re n'anaveomp ket, *Kroaz ar Vretoned* ha *Breueriez ar Brezoneg* a gas o gwellañ gourc'hemen-nou a drugare, o lavaret a greiz kalon: Bevet ar skolioù kristen, ha, dreist holl, ar re a oar bean war an dro kristen ha breton!

Ar re-man, da gentañ, a gavo harp, sikour ha karante a-beurz *Kroaz ar Vretoned*, *Breueriez ar Brezoneg* hag o mignoned. Kentañ bla vo, ni diskoueo d'e holl, ma karont rei d'imp kelo eus o frijou, 'vel 'deus gret hiniennou ar bla-man, penôs n'e ket gevier a zo ganimp pa lavaromp e rofomp d'e, eus hon gwellañ, sikour ha skoazel.

GALVADEN D'AR VRETONED

Jubile a velegiez an Tad Santel ar Pab Pi X

Pelerinaj Frans da Rom an 2 a viz Gwengolo 1908

Ar Vretoned a zo bet a-viskoaz leun a garante evit ar Pab. N'eus ket gwell béll, ar Pab a lavare

d'arc'heskob Roaon :

Breiz-Izel a zo hen leun a spered kristen, ma eo warni e kontomp evit hon dic'haouan eus hon holl drubuilhou. O! ma teuje ar bed ha Frans dreist-holl, da heuilh reolen ar Vretoned: « Kentoc'h mervel 'vit 'n em gailhari », neuze Doue, a dra zur, a raje disken en hon zouez ar peuc'h.

'Vit respont 'vel 'zo dleet da gomzou evellen, ar Vretoned a renko bean er penn kentan en pelerinaj Rom ar bla-man: *Ar Pab a gont warni!*

Koulskoude, an holl n'hallont ket mont da Rom; mes an holl a hall kemer lod er pelerinaj en eur gas o diner evit paeañ ar veaj da reo-all.

Ar veaj, mont dout, en trede-klasi, paset kwit a frez ebel ken, a gousto

208 lur

eus Pariz. Ar veaj ac'han da Bariz a zo en tu-hout, da laret eo, 25 lur ouспен da gontan. Ar belerined a welo, ouспен Rom, ar c'hériou bras-all eus an Itali, Assise, Florence, Padoue, Venise, Milan. Dre ar Suiz e tizrofer d'ar ger.

An otrone Garnier, beleg, 36, bali Hausman, Pariz:

Louis Neumager, er c'hantonion, en Gwengamp, a zo karget da dastum an hanoioù.

Ar prof 'vit ar pelerinaj a hall pep hini kas war eun d'an otrone-man, pe rei da veleien e barouz da gas.

ZERR DA C'HOUK!

Miz eost!

Enpad m'eman eur rum-tud o poanial hag o c'houezi evit gonit bara gouanv d'an holl, eur rum-all dizoursioc'h, a dremen devezioù evurus o vale bro.

Evelse eman ar vue: eur rum a boagn, eur rum-all a vale; hag evel evit lakat gwasoc'h poan er re gentañ, an eil rum a zibab evit rodeal ha diskwiza ar miz a dlefe bezan gwestlet d'ar boan ha d'al labour hepken.

A dra zur, daoust d'an doujanz kristen, o welet divroidi o tremen dre an hent en gwetur dre dan, o klevet o c'hoaradennou ha dirak o bue skanv, meur a veder, a vederez daoubleget war an erv, devet gant an heol, laebet gant eun ulfen louz hag eur c'houezen vervet, a c'hoanta kas eneb d'ar pennoù diboell meur a gomz digompouez hag ive meur a valloz marteze...

An neb a labour stard, an neb a c'hone e vuegez ouz c'houezen e dal, na gar ket kalz an dud didalve; ha, dirak e boan, e drubuilhou, hep bezan koulskoude 'barz ar wirione, eo aotreet d'ezan 'n em glemm ha grosmolat a-wechou...

Hon c'henvroiz en em glemfe, a c'hrozmolfe gwasoc'h c'hoaz ma anvefent reisooc'h spered al loden vras eus an divroidi a bleustr Breiz enpad miz eost.

Daoust d'ar bevanz-mad a gavont enni, daoust d'an er yac'hüs a c'houlout diganti, daoust d'al lec'hioù dudius a glaskout hag a gavont enni, an divroidi n'o deus alies evit hon Bro nemet dismeganz ha gwaperez. Tud, giziou, gwiskaman-chou, yez, holl e vont gwapeet.

Ma 'z eo ken divalo-se Breiz, perak dont d'ez?

Ma 'z eo ken goue-ze ar Vretoned, perak o da-rempredi?

Ar gwasan, ar pez a ra ar muian poan d'eur Breizad, eo gwelet ar Vretoned o-unan o rei dorn d'an divroidi da zispenn ha da zismant ar Vro.

Er zun-all, eur gelaouen diskiant a Sant-Briek,

renet gant eur c'hreisteziad (méridional), eur gelaouen ken zod hag he mestr, a velle diwar-benn Sant-Nikolaz-ar-Pelem, eur pennad-skrid sinet gant eur *reder-bro*. Mar ne vije er pennad eun nebeudig komzou enep d'ar skol gristen ha d'ar Brezoneg, ne dalveche ket ar boan komz anezan; ar pennad a vije eun dra hep talvoudegez, dellezek (digne) eus eur mestr-skol bennak, ganet d'ar zadorn da noz ha gouest hepken da skriva eun toullad sotonioù warlerc'h eur c'hofad gwin.

Siouaz! en eur dremen, ar paourkez aotro a wela war ar skol dindan skeuden ar Galon Sakr an diviz kristen: *List ar vugaligou da zont da-vedon!* — Perak, emezan, na vije ket skrivet el latin: *Sinite parvulos venire ad me*; pe en galleg: *Laissez venir à moi les petits enfants...* Mes skriva brezonek war dal eur skol, zoken eur skol gristen! Hag an eubeul daoudroadek da goll e benn... Tan ha kurat! Difennet eo eta komz galleg da vugaligou Sant-Nikolaz!

N'eo ket, aotro mestr-skol, n'eo ket difennet, pell ac'hane, komz galleg da vugale Sant-Nikolaz; bugale skol gristen Sant-Nikolaz a oar kement a c'hallig, marteze muioch, evit bugale ar skol-all. Mes, en skol gristen Sant-Nikolaz, en eur diski galleg d'ar vugale, ne ve ket ankouet penos ar vugale-ze a zo Bretoned; hag evel Bretoned, e tleont karout o Bro, evel Bretoned e tleont karout o yez: ar Brezoneg!

Ar bugel na dle ket bezan savet en kasoni e vro, ma na fell ket d'e vestrou ober anezan di-weatoc'h eun den diwriennet. Ar bugel a dle bezan savet en doujanz hag en karante e dud. Penos, aotro mestr-skol, e talc'hfet en kalon ar c'hrouadur doujanz ha karante e dud, mar deuet da laret d'ar bugel eo diskiant ha zod komz ar yez bet komzet a viskoaz gant e dad, e vam hag e dud koz!

Herve ma stumfet ar c'hrouadur, e kavfet anezan. Eur bugel savet en diavez karante e vro, a zo, siouaz! eur bugel kollet: n'eo na Breizad, na Gall. Ar bugel-ze n'eo netra, bezan eo eun den gwall-erurus, henvel war mor ar vue ouz eur vag distur!

Setu perak, hep dilezel ar studi galleg, pell bras ac'hane, mestrou-skol gristen Sant-Nikolaz na zispriozont ket ar brezoneg. Evel Plijidi, Tregrom ha kant skol gristen-all, bugale Sant-Nikolaz a zo gouest, nag e ve droug gant ar *reder-bro*, da c'hoari en galleg hag en brezoneg gant bugale kement skol dizoue a zo. An tadou, ar mammou hen goar; ze zo kiriek ne vank ket a vugale d'ar skolioù kristen.

Mar karche ar Gouarnamant bezan lezet heb frankiz gant hon skolioù, pell amzer 'zo e vije goulonteret e rei!

Ha neuze, perak p'eo mad al latin, p'eo mad ar galleg, ne vefe ket kenkoulz all ar Brezoneg, pegwir e vevomp en Breiz! Petra, ar c'hezeg a c'hall gourignat, ar zaout a c'hall blejal; ar chas a c'harz, ar moc'h (respet d'am mestr-skol) a skrinj, an evned a gan...

Ar Gall a gomz galleg, ha ni, Bretoned, n'hallfomp ket komz en Brezoneg, n'hallfomp ket diski d'hon bugale ar yez a garomp... Zerr da c'houk 'ta, koz mestr-skol daonet! Jezuz, ma Doue, fent a rez d'in... Ankouaet 'teus eta, penos gwechall, p'az pije laebet da liboud, da vam a dorche da benn-a-dreus d'it... en brezoneg!

Zerr da c'houk, glouez!

AR YEODET.

Hag e oa troc'het e droad kenta d'al leue war ar gerio-ze. Gonde ez ejont d'an ti. Mantret e oant! Renket war an daol ez oa eun toullad dre-bajou hag evachou eus ar c'henta : bara fresk, kig fresk, fourmaj, frouez, gwin malaga, likuriou, hag all. Jakez ha Marc'harid, hag o bugale, ne oant ket kustom da veza war lipachou druz bemdez evel al lakizien eus kear ; mes ar wech-man o doa eun tanva c'houek eus al lipouzachou druz-se ha hep a gofad mat a rejont, na petra 'ta? Petra o dije graet ken nemet drebi ha karga p'oa doa d'ober?

Hep kaout amzer da ziazeza mat o c'hoiad, an daou bried a zizroas adarre d'ar c'hraou e leac'h m'edo al leue bihan astennet war an teil o c'hedal beza skanveet eus a dri droad all.

— « Pe seurt gras a c'houlennomp d'an eil? »

— « Goulen ar c'hras, eme Varc'harid — rak gouzout a rit eo ar merc'hed a rank beza atao o c'hour'hemenn — goulen ar c'hras d'eomp da gaout eun ti dereat, gouest zoken d'ober mez da Grogmad gant e vaner. »

Hag e oa gret hervez m'he doa lavaret Marc'harid. Dont a rejont o daou er-meaz ar c'hraou, mes, e leac'h o'zi-soul koz, e kavjont eur maner kran, kranoc'h eun tam mat eget hini Krogmad. An holl arbereri a oa en ti ivez.

— « Arneliou, bankou a zo en ti, forz pegement, a lavaras Marc'harid, mes goullot. Red eo d'eomp goulen ar c'hras ma vint karget a zilhajou dereat evidomp hag evit hor bugale... Sell, welez ket dilhad Perig aman en truilhou tout? »

Ar vugale a c'haloupe dre an ti, ha Perig en doa digoret eur pres hag a yeas da guzat ennan.

Jakez ha Marc'harid a zizroee d'ar c'hraou da droc'ha trede troad al leue bihan :

— « Ma c'houlentes ive, eme Varc'harid — rak karet a rea ar metal — digas d'eomp eur yalc'hadig bennak a arc'hant? »

Hervez he c'hoant e oe great, rak Jakez ne gawe morse da zislavaret d'ar pez a lavare e wreg, ha trede troad al leue a oe distaget diouz e c'har.

Pa deuas war drezou an nor, Marc'harid a glevas unan eus ar vugale o lenva forz. Galoupat a reas da welet. Perig eo oa tapet dindan eur beac'h dilhad er prez ma oa eed da guzat ennan.

— « Krin ginaouek, eme Varc'harid o chacha war Berig, ma karjes beza gouezet ive e tie dont dilhad en armel! »

Asa, Jezuz! na diez eo da denna... Jakez! Jakez! »

— « Hael! »

— « Deus 'ta buhan da zikour chacha! Iche-kon! na start eo an traou warnout, va mabig. »

Jakez a oa krog e breac'h ar bugel ha Mac'harid en e ziskouarn! Evelse ne badas ket pell an abaden!

(Da heuilh).

DIRLEM.

ARZUR

Ha souden, an den azeet a dapas ar goaf aour, a skoas gantan an diren arm. Eun drouz henvel ouz hini ar vombel o skei war ar c'hloc'h a dregernas dre ar c'hao, mes den ebet na finvas nemet ar roue kousket.

Hanter zavet diwar e wele mein, e troas gorrek e benn loutedet treskek an den koz :

— Marzin, emean, ha poent eo hadsevel?

— N'e ket c'hoaz, o Arzur!

Neuze ma rener a gomzas ouzin, henvel e veuez ouz trouz an ezen o finval an deliou.

— Komz outan, emean, ha goulen ar pez a zo war da spered ; pa vo gourveet, e vi re ziwezat.

Penôs am oe an hardiegezh da gomz, n'on ket 'vit hen laret. Koulskoude, kalonekaet gant ma c'harante 'vit Breiz, e lavaris :

— Pegoulz e leui, o Arzur?

Ar roue a chomas mut ; mes Marzin, o trei warnon e zaoulagad maro, a gomzas evitan :

— Dont a rey, emean, pa vo dihunet spered Breiz a-neve dioc'h spered Arzur ; pa redo en ho kwazied, pur ha divlam, ar gwad keltiek, neuze Arzur a ve beo adarre.

Ar re-ze a welez en lez ar roue a labouras evel-

tan, pad o lue, hag a heuilhas e roudou. Pep hini ane a zo bet, herve e c'halloud, eun Arzur neve. Gret evelte, o Bretoned a vremen ; evelse e tihunfet Arzur.

C'hoant am oa da c'houlen c'hoaz meur a dra, mes n'am oa ket amzer. Rak kerkenet ma oe ar roue astennet war ar mein, setu eur c'hurou o strakal ken rust ha ken spontus ma renkis sempla.

Pa zihunis, pep tra a oa sioul en enezen Avalen. Trouz ebet 'met ar mor o tont gant herr, ha moneuzion an evned o tont gant al lano.

An heol, o tiskan en dremwel, a sklerijenne ar reier hag an ôd gant e vannou ru. Etre an enezen hag an douar, ne oa ken nemet eur wenojen striz, ar gwagnnou o tirecek a bep tu d'he golo.

Daoust ma oan skwiz, e renken tec'hel raktal. Dre chans e c'hallis tremen.

Pignal a ris gant ar wenojen sounn ha risklus a yee eus an ôd da di ma miguon, trubuilhet bras ma spered gant ar pez am oa gwelet. Daoust petra oa gwir en kement-se?

Marteze eo an derzien a oa endro d'in?...

'N em gaout a ris en hent gant eur glaskerezh bara hag a deuas d'am c'hat.

— Siouaz, otro, kelo fall a zo arru en K...

— Petra laret?

— An otro K... a zo maro, beuet e porz Sant-Malo...

Er maner, pan arruis, e oa chanchamant. Er porz e kavis merc'h ma mignon, an hini a oa bet o ker'chat ac'hanon diouz ar beure. Klevet a ris ganti an doareou. Eur martolod a oa koueet er mor ha na ouie ket neuil. He zad a oa lampet en dour evit hen sovetat, mes o-daou e oent beuet asambles...

Hunvre pe wirione? Goulennet ouzoc'h ho-unan, lenner kez. Evidon-me, torret ar chadeu bounner am stage ouz ar gouarnamant gall, ez on deut breman da chom en Breiz-Izel o labourat douar. Ne gredan ket am ije kollet, nag e ve goulou ma yalc'h evit se.

Amzer am eus c'hoaz da labourat evit Breiz, rak me 'zonzj am eus intentet petra lavare Arzur.

GWELTAS.

KELHEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

RUNAN. — Ar Pardon. — Disul, 26 a viz gouere, e oa pardon bras Runan. en enor d'an Itron-Varia-Runan, d'an Itron-Varia 'n agoni, da Itron-Varia 'n Esperans.

An amzer a oa kaer ; adaleg ar beure, ar bele-rined a 'n em vodas er bourg, leun a vugaligou ouz o heul, oll deut da bedi ar Werc'hez da diwall o zud, o c'hlanvourien, en eur gir, deut da 'n em wetlan d'an Itron-Varia a Runan.

Da dek eur 'met kart, muzig yaouankiz kristen Pontre a antreas er bourg 'n eur zôu. Epad an oferenn-bred, ar Vuzisianed o deus sonet pep seurt tonio dereat. An iliz a oa greet gant kalz a volante vat hag a biividigez, dre urz an aotrou Person. Epad an oferenn, an aotrou Toullelan, person Lezardie, 'n eus gret eur zarmon gaer ha komzet eus ar Werc'hez. En nebeut girioù 'n eus displeget ar zikourio a ro ar Werc'hez d'ar gristenien.

An holl oa souezet o welet pegement a zevosion a oa e Runan. Eur bobl vras a dud 'oa 'n em vodet eus a-bell.

Goude an oferenn, war blasen ar bourg, eul labourer, e hano Fanch, a laras a vouez uhel : An tol-man, 'velkent, eo ét al lore gant an iliz ; sellet plasen ar bourg ; n'eus netra amsa, hag an iliz a zo leun.

Ar gousperou oe kanet war an ton bras, ha da

heul, ar prosesion, kaer meurbet ha diduet gant muzik Pontre.

En hano Runaniz, 'n hano ar bele-rined, tragare d'an aotrou Febvre, person, da vezan galvet muzik Pontre ha da vezan great an holl dreo war an ton bras. Da via, e vezo muioc'h a dud c'hoaz en pardon Runan, rak daoust e ve laret, nan e ket maro ar Feiz en Bro-Dreger.

Traou Yeodi.

Carlotta, lennerezh planedenno. — An dud yaouank hag an divroidi. — Ar Barizianezed.

Laret 'meus eun nebeut girioù war bardon Runan, mes c'hoaz, lennerien ger, ec'h an da laret. N'halla ket level, pa fell d'in difenn ar wirione. Gwelet 'm eus bet Carlotta en lies asamble ; setu hi deut da Runan 'vit ar Pardon.

Petra eo Carlotta? Eur plac'h yaouank o heul eun den bihan teo, bras e gof ha berr e zioharr. Carlotta 'zo lennerezh planedenno.

Sonje ket d'in penôs oa ken skanv pennou merc'hed yaouank a zo.

Disul, pa weleu merc'hed ha pôted yaouank o tostet da Carlotta, e sonjeu ha c'hoant o doa da zerri kontram. Klevet e vije ar *Potr teo* o c'houlen digant e blac'h petra 'vije en godello an dud ; pesort losten pe loer a vije gante, ha Carlotta a lare petra 'vije. Nag a blac'h am oa gwelet o ruian eno, pa vije laret d'ei he siou!

Koulskoude, mar pije c'hoant, ne vije ket gwelet ar *C'hoaf Bras* na Carlotta oc'h ober an inventar er godello.

Gwasoc'h 'zo, siouaz! Gwelet 'vije merc'hed a vrud vat o prenan billejo digant al lennerezh planedenno. Ze, eus o feurz, 'zo testeni a zempladurez. Trutello, bardello a ro ive, evelse, o gwenneien d'ar galomperien, ha vit petra? Petra gaer 'vije war ho pilhed? Kaojou flour, kaojou faoz... 'vit s'ambat hoc'h arc'hant.

O lennerien ger, nag a Barizianez e Runan disul! Gwelloc'h o dije great o chom e Pariz, 'vit o tont d'ar vro da vale o gizioù skwemp hag o galleg bras.

Gwelet a ve, en amzer-man, kalz evelse o redek, 'n hon Bro. C'hoaz, mar kaozechent brezoneg evel ma ra an dud a feson, ne larjen ket nemet a dra. Klevet am oa unan, matez gant daou den koz, *herve lavar*, ha mestrez, *herve lar-an*, o laret d'he miguonez : *Elle va s'aller lâ-bas*.

Setu aze o galleg. Gwasoc'h, klevet am oa diou-all o komz galleg d'o mam, ha hi na oar gir abet, gant mez da gomz brezoneg ! Ze 'zo hudur !

Foei! foei! d'ar Barizianez
A ra mez da dud he bro!

Traou Yeodi.

COADOUT. — Al laer. — Al laer a zo bet er Bel-Air, e ti eun devejer hanvet Guillosson ha laeret digantan eur yalc'had vreo a arc'hant.

GWENGAMP. — An avalou. — Muioc'h a avalou a zo 'vit ne zonzel da gentan. Gant se, ne voint ket ken ker. Komz a rer a bevarzek real, eur skoed. Da vihanan, n'e ket da gredi e tapfont. ugent real, 'vel ma kreded da gentan.

TREVEREC. — Pardon sant Veran. — Traonien douh ha didrous Coatmen hag ar vro tro war zro, o deus tregernet disul diwean gant sonioù dous ha flour muzik kristen da breizad Pontreo, deut da enori sant Veran, patron ar barrouz. Ar zonzj eus madelez an otro Person, an otro Coadic, pardoner hag an otro Maer, a chomo moulet da viken e kalon ma Zonton hag e vugale. — *Job ar forniere*.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

Ar Vretoned divroet

Eur Vretonez, chomet stag ouz he Bro hag he Fe, daoust d'ei da veau 'houe pell 'zo divroet, a skrive evellen an deiu-man.

« Setu me dizro, emei, gant ma mistri, da gastel P... 'barz ar Vienne, elec'h am oa kavel ken hirr an amzer arlene. Ar bla-man e kavin hirroc'h c'hoaz. Kristenien vat ar vro-man a gar kement o beleien, ken o deus kaset o ferson e-kwit ha laket eur leanez difroket er presbitoar d'ober skol d'o bugale.

Den na zebtant kaout diezamant o welet ar barouz hep beleg. Evidon-me 'zo en sonj mat chom hep dont aman da via, gant aon da dapout klenved an dud-man, rak me wel aman tud hag a oa gwechall kristenien vat hag o deus 'n em gustumet da dremen hep oferen na beleg... Kentan bla 'vo, a dra zur, me dizroio d'am bro ! »

Bretoned, c'houi hag a zo betek breman chomet er ger, n'et ket da Bariz ! Ne welet-hu ket ar re 'zo et e fell d'e return ? Eleiz a Vretoned a dizroje d'ar ger, panevert elec'h o deus staget o gavr e renk breman peuri..

PREZEGEN

gret gant an Otro Clerc, en Plijidi,
de ouel ar prijoz

Goude bean lavaret e oa dleour da Blijidi; aboue an de ma 'n evoa gwelet c'hoari eno *Buc santez Filomena*; goude bean roet meulodi da barouz Plijidi 'lec'h ma kaver peuc'h hag unvaniez etre ar veleien hag ar gomun, an otro Clerc a stagas da ziskoue pesort deskadurez a dle tadou ha mammou rei d'o bugale.

Tri dra a zo ha n'hellomp ket tremen hep-e : ar fe gristen, dre mac'h omp bugale d'an Otro Doue ; ar spered breton, ha, dreist-holl, ar brezoneg, dre mac'h omp bugale da Vreiz-Izel ; ar galleg, dre mac'h omp bugale da Vro-C'hall.

Ar fe gristen eo kaeran ha gwellan mad a hell eur vamm, eun tad kristen lezel gant o bugale ; an arc'hant hag ar madou n'o zalvout ket, mes ar fe a rei. Red eo eta da barousianiz Plijidi miret en he zav o skol gristen ha kas d'ei o bugale, rak ar skol vat a zo eur vammen a fe.

En tu-hont da garout Doue, er skol-man e tesker d'e c'hoaz karout o bro Breiz-Izel ha pez a zell outi. 'Vit kerzet war an dro war hont an ne ha war hent an enor, eo red d'imp bevan diwar ar spered breton. Karomp eta hon bro a greiz kalon. Da gentan, karomp he douar, he mor, hec'h o'chou a denn kement a dud d'o gwelet. Kaer eo bet gret gant dorn an Otro Doue, ha kaeraet eo bet c'hoaz gant dorn hon zud koz : gwelomp endro d'imp o skedi mil ha mil a labouriou mein, ilizou, kalvarion, chapelou, touriou ! Mes Breiz-Izel, ma eo kaer, a zo mat. Hon trevajou a zo barrek d'hon magan, hep n'hon deve ezom ebet eus ar broiou-all.

Chomomp eta stag, korf ha kalon, ouz douar hon zud koz ; ma ve red mat d'imp, de pe de, hen kwitat, ne reomp ket evel liniennou hag eur wech dilezet gante o bro, o deve mez o sonjal anni hag o komz anezi.

Eur Breton a dalv tud ar broiou-all, ma ne dalv ket muioc'h. Pa ve zellet piz, n'eus ket eur vro pinvidikoc'h 'vit e hini. He c'haeran pinvidigez oe he yez, ar brezoneg. Ar brezoneg eo kosan yez a zo en Europ. N'e ket mat laret eo ar brezoneg re verr 'vit tapout da zisplegan an holl vennoziou, rak ar galleg a renk ive laerez giori eleiz digant ar yezou-all 'vit kontanti an dud a studi. Mes da nep a oar an tu anean, ar brezoneg a zo pinvik a-walc'h : nag a labouriou, nag a skridou brezonek a weler hirie o tiwan ; nag a dud a skiant a deu da deski ar brezoneg !

Bezomp eta divaz o komz hag o lenn ar brezoneg. Kaeroc'h c'hoaz ; skrivomp ar brezoneg, mar goulomp d'erc'hel eur bluen. Kanomp, da vihan, treo brezonek, soniou fentus pe flemmus, gwerzioz truezus, ha, dreist-oll, hon c'hantikou hag a

zo warne toniou ken kaer ma weler tud eus ar broiou pell o tont d'o c'hilask ha d'o skrikan.

Enori hon brezoneg dre gomz, dre skrid ha dre gan n'e ket c'hoaz renti d'ean an holl enor ; ar brezoneg a dalv ive da veau laket war an teatr ; ar skouer eus ar wirione-ze a zo aman hirie, en Plijidi, dirak an daoulagad.

Dre mac'h omp ive stag ouz Bro-C'hall, eo red d'hon bugale deski ar galleg, en tu-hont d'ar brezoneg. A dra zur, eun toullad blavezioz 'zo, Bro-C'hall a zo bet en hon c'henver eul lezvam kentoc'h evit eur vamm ; n'eus forz, eun dra vat hag eun dra red eo deski he yez. Da gentan, abalamour d'ar c'honversou ha d'an darempred a zo zavet etre an dud aboue ma vale an henchou-houarn. Ha neuze, eun den hag a oar diou yez a dalv daou den. Komzet d'in eus eur Breton hag an eus desket ar galleg o trei brezoneg en galleg ha galleg en brezoneg. Ne vo Gall ebet trec'h d'ean war ar galleg.

Parousianiz Plijidi a dle eta d'erc'hel da rei skoazel d'o skol, d'o beleien ; dle eo d'e, zoken, 'n em gustumi, int o-unan, da lenn brezoneg, ra pa renkfent mont d'ar skol gant o bugale.

Ar re-man, hag eman warne sellou o c'hamaradou a *Vreunies ar Brezoneg*, a fell d'e poanial bepred gant o labour, gant aon ne deufent da vean trec'h. Goulennent skoazel hon zent koz ha miret bepred en o c'halon, 'vit reolen o bue, ar gir santel : *Done ha ma Bro*.

AR VRETONED ER MAROC

Ar ministr a zo o paouez rei bep a briz a vil lur da c'houezek martolod hag o deus gret toliou kaer du-hont, er Maroc. War ar c'houezek-se e zo dek Breton :

Jourdy, eus Douarnenez ; Boisard, eus Pempoul ; Tangui, eus Rosko ; Rouvel, eus Binic ; Bideau, eus Douarnenez ; Longuestr, eus Douarnenez ; Sévellec, eus Douarnenez ; Manuel, eus Gwazien ; Guillou, eus an Orlant ; Merdy, eus Brest. Gwir eo lavar ar barz : Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv ; n'eus pobl ken kalonek a-zindan an neuv.

Bez et eta lorc'h ennomp da vean Bretoned !

AL LONKER HAG AN DIAOUL

Nag ar vuez a zo kalet !
Goude daouzek vloaz eurusted,
Itanv e chom
Ar potr mat Lom.

Mes hen da gas kwit e c'hla'char,
Ne zale ket en entremar :
Gliz liou d'an aour
D'ar galon baour !

Hogen, mar deo e geuz beuzet,
E yalc'h ivez a zo teuzet,
Hag an den keaz
Na gav ket eaz.

« Penaos ober ? e lavare ;
Arc'hant a faot d'in adarre,
Diouz tu pe du,
Mil malla'ch tu ! »

Da c'hellout c'hoaz en em vezvi,
Kement tam koz arrebeuri,
'Zo en e gerz,
A lak e gwerz.

An arc'hant bet a bad nebeut,
Egiz en tan eun tam keuneud,
Ha Lom bepred
'N eus seurt ebet.

Mat emezan, kerzomp laouen,
Daoust ma 'z eo kras hor c'hornailhon :
Be 'zo, 'michaas,
Bannou a chans ?

Gwir e lavare, rak kerkent
Ma tigouez er genta kroaz-hent,
E klev : Hep ! Ho !
Eur banne 'vo ?

— E feac'h, aotrou, me 'gemero ;
Paea, avad, c'houi a renko ;
Ar mell pez lom
A blij da Lom.

— Lom, bez' az pezo, mar kerez,
Peadra d'ober mil bavvez !
— Aotrou, roet d'in,
Seder e vin !

— Marc'had a vezo red ober !
— Me a zino pep tam papert
— Aour az po rei !
— Oh ! gwel a ze !

— N'e teus nemet nac'h da Jezuz,
Hag e vi da viken eurus,
Gant arc'hant puilh
Warnout o ruilh...

Ha d'ar gear Lom a zo redet,
Hag ar yalc'had a zo souchet
Etre daou gleuz...
Bez' en do keuz !

Evel just, Lom a ev ato ;
Gwir eo, gant e aour ne vezo,
Na zoken tost,
Berrik o lost.

Eur reorad gantan, eun devez,
E yalc'had e kont dievez...
Gwelet e oe,
Ar paourkeaz leue !

Roc'h'al 'ra war e guziadel ;
D'ez neuze e sav eskol ;
Pebez taol kaert
Ema ar laer.

— Me 'zo paket ! me 'zo laeret !
Ema Lom pa 'z eo dihuet ;
Echu ganin !
Eva ne rin !

Bez' am boa kant mil lur ama,
Na traou am boa c'hoaz da eva !
Kras eo va goug !
Me 'ya d'ar groug !

Hag hen ha tapout eur gorden,
Hag he staga ouz eur wezen.
Outi ez a,
Mervel a ra...

— Salud d'it ! Va zammig aotrou,
O c'hedal edonn da stripou !
A lavar Paol ;
Great eo va zaol !

Yan AR FLOC'H.

BEZ LAOEN O BREIZAD

O Breizad, den a boan, te, labourer douar,
Na doue ket Done, mar deo stenn da labour,
Mar c'houezez, mar teus poan pa vez krog 'n ez [alar,

Ped Doue, gwelloc'h eo, goul digantan sikour.
Gout 'ran penos 'teus poan rak me 'zo labourer,
Evelldout oun bemde deus ar beure d'an noz.
'Barz ar park pe ar prad oc'h ober da vicher,
Ankoua da doan, ped Doue ha goulen e vennoz,
Bemde out o 'temzi, oc'h arat pe hadan,
Pe o tastum ar freuz dimeus da zouarou,
Dindan ar glao, an erc'h pe an heol an tomman,
Al labourer 'c'h a 'maez dre bep seurt amzeriou.
Pan arrou an noz, pa zono 'n *Anjelus*,
Neuze en eur bedi d'ar ger te zistroo,
En dro d'it na weli nemet dremmou joaus,
Unan vo diskabel, egile divoto.
Pa vo debret da goan ha gret eur vagedan,
Laret ar pedennou ha koaniet al leened,
Ebarz da wele kloz te a vezo laouen,
Da c'hortoz ar beure, o hunvreal, kousket.

Eul Lenner.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

ROUBANANGHOU

RENERDOEN

EMBANNOU-KONVERZ

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skodet evit ar brolou estren hag evit ar Broio keltiek.

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

An Aotrou TONNELLES, 27, ball Charner, a zigemer sez

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FUNKZ AN GIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar galleg er aio a Vreiz.
FUNKZ AN GIZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het.
Ouspen ar Voz, e ve Pec'h'e di
MILIN.

Gouel ar Werc'hez Hanter-Est

Gouel ar Werc'hez Hanter-Est a goue ar bla-man d'ar zadorn. Eun digare kaer eo, ouспен ar gouel, da rei enor ha meulodi d'ar Werc'hez, p'eo gwir, evel ma lavare eur beleg breton en kador an Itron-Varia en Gwengamp, ar zadorn eo zult ar Werc'hez.

Digareou-all a zo c'hoaz, ar bla-man, d'enori ar Werc'hez, gant gouel Hanter-Est, en tu-hont d'ar peza ver kustum d'ober. Ar bla-man 'man gouel he hanter-kantved en Lour; ar bla-man, 'vit pobl Frans, eo eta bla ar Werc'hez; mes, etouez deveziou ar bla, ar c'haeran evili eo ar bemzekved a viz est, ar 3e ma eo douget, korf hag ine, d'an ne ha kuronet gant kaeran kurunen a zo bet biskoaz hag a vo biken laket war benn eur grouadurez.

Er mare-man e komzer ive ma vo diskleriet gant ar Pab, 'vel eun dra da gredi gant an holl gristenien, eo bet douget korf ar Werc'hez en ne gant an Ele, hag eman er baradoz gant he c'horf evel eman Hon Salver, he Mab.

Betek breman an dra a zo bet digemeret hag anzavet gant an holl; hepdale an Iliz hen lako etouez ar gwirioneou da gredi.

Setu adarre eun digare-all da renti gloar hag enor da Vamm ha da Rouanez an holl grouadurien, ar Werc'hez vinniget.

Mes na pa vije lezel kement-se agoste, ni, aman, Bretoned, n'hallfemp ket tremen hep komz eus gouel ar Werc'hez Hanter-Est.

Perak? Abalamour in' hon deus kemeret anezi da advokadez evit hon labouriou brezonek.

Au 10 a viz est, 'zo bet lavaret eun oferen en hec'h enor, evit ma teurvezo bean mamm en hon c'henver, en kenver Breiz, en kenver *Breuzie ar Brezoneg*, a glask bodan ar vugale d'ober d'e anaout ha karout ar Vad hag ar Wirione herve o Bro.

Lakomp hon holl evez hag hon holl zoursi eta d'ober enor ha da ziskoue karante d'ar Werc'hez gant he gouel, evit ma teurvezo zikour ac'hanomp, hon ren, hon sklerijenni holl. Bretoned, hag ober ganimp eur bobl 'vel gwechiall.

Hon c'henvroiz Tramor o tont da weladenni Breiz

Ar zizun diwezan e tigozeu aman unan eus hon gwellan mignoned a Vro-Gambri, an aotrou Evans, lenner *Kroaz ar Vretoned*, hag a oar mat ar brezoneg evel pa vije ganet e Breiz-Izel. Gantan e oa an itron Evans, hag an aotrone Gruffydd ha Robert. Deut e oant a ratoz-kaer da weladenni Breiz ha dreist-oll d'ober anaoudegez gant barzed Breiz-Izel. Paouez a rejont e Sant-Brieg e lec'h e oent digemeret gant skrivagnecien *Kroaz ar Vretoned* Dir-Na-Dor, Gwellas, Ab-herve. Ac'hane ez ejont da Voutroulez, da Gerbaez, da Gemper, da welet ar varzed Lajat ha Taldir hag ivez an aotrou 'n eskob Duparc a zo aet ar vrud

anezan dreist d'ar mor dre ma 'z eo eur mah ken feal d'e Vro c'henidik, Breiz-Izel. Goude-ze e trojont o c'hammejou war-zu Bro-Wened hag e weljont moarvad n'eo ket gaou ger-arwez hon mignoned Herrier ha Mellac a dalv da hano d'o c'helouen; **Dihunamb**. Dihun mat e oa an holl da rei d'e eun digemer kalonek ha fizianz a zo o devo kaset en dro d'ar ger eur c'houn ar gwella eus o beach. Talvoudusat harp a deufe d'hon emzav ma teufe al liammou a gengarantez da starlaot mui-ouz-mui etre Breiz ha Kambri, da adveza ar peza e oant en amzer hon zent koz diou hobl ne rae nemet unan: Dorn-ouz-dorn ha kalon ouz kalon!

E Pemponll ivez hon deus bet ar blijadur da welet an aotrou Jenkins, unan eus ar Vretoned Tramor disket ha kalonek o deus poaniet ar muia evit ma vije disket ar brezoneg e skolioù Breiz-Veur. Diskennet e oa gant e diegez e Kerno, e ti an itron Gerard, lennerez da *Groaz ar Vretoned*, ha n'oufe ket ar Vretoned kavout gwelloc'h digemer eget en he zi. Hon breudeur a Gambri a blij kenan Breiz ha Breiziz d'e ha fizianz a zo e teuint da vla niverusoc'h c'hoaz d'ober anaoudegez ganimp.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

dent da vale en Breiz

d'he c'hamaradez en Pariz

(Troet diwar ar galleg gant N.)

Luci gez.

Setu me eta en Breiz-Izel; seiz vla so ne oan ket bet, hag ekavan an treogwall chanchet. Gwir eo, marteze, kentoc'h eo me an eus chanchet, rak ar Vretoned a chom bepred memes tra. Pa oan deut ar wech-all ne oan nemet unnek vla ha ne glaskan nemet redek ha c'hoari; mes ar wechman ma daoulagad a zo digor war meur a dra hag e kemeran plijadur o studian eun tam ar vro. Gout a rez, mam-goz a oa Bretonez, eus a goste Bear. Bean 'm eus c'hoaz kalz a dud o chom eno; peadra 'm eus 'vit tremen ma daou viz, en eur vont ha dont eus ti an eil moereb da di eben.

Betek breman 'm eus chanchet diou wech a barouz. Lec'h oun bet ar wech kentan 'm eus kavet hira hira an amzer; mes lec'h oun breman, en Kerroziou, an eus kalz a blijadur; mar gallau, me chomo eur miz, ma ne gav ket ma moereb ha ma c'hendirvi vo re vec'h d'e miret ac'hanon keit-all.

Gortoz ma kontin d'it adalek ma zro gentan. Ma zad, pa gwitais Pariz, an evoa kaset kelo da zont d'am c'herc'hat d'eur c'henderv-gompez d'ean hag a zo eil-ver pe « adjoint » en e barouz; eno e sonje gant ma zad e vijen ar gwellan: tud pinvidik, ar vugale bet holl er skol hag er gouent, hag amzer gaer d'e da vale.

Pan arruis er gar Bear, e kavis eur wetur o c'hortoz ac'hanon hag eur potr yaouank ugent vla pe daou-vla warnugent:

— *Bonjour, cousine*, emean.

— *Bonjour, cousin*, emeon.

Lakat a reas ma fakadennoù er c'harr, ha setu ni tressek Kerc'honitellou, (eun hano fentus, liano ar vilajen!)

Epad an hent, ma c'hendev, Hyacinthe e hano,

a roas eleiz a veulodi d'in war ma liou, war ma stumm, war ma gwiskamant.

— Rose, emean, ha Matild a vezo jaloux ouzoc'h breman zouden.

Ne oemp ket pell oc'h arrouat, gant an ti. Rose ha Matild a oa war an treujou. Bean oa ive eur vatez goz hag a lavaras d'in eun toullad konzou gant eun er laouen, mes gret oe d'ei tevel; n'intentis gir; marfad e komze en brezoneg; ma c'henderv, avat, ha, dreist holl, ma c'hendervezed, a gomze galleg. C'hoaz in a ran c'hoaz pa zonjan en o stumm hag eu o langaj.

Da gantan, 'n em laket o doa ken fero ha m'o devoa gallet evit digemer ac'hanon: bep a dog o devoa o-diou, bep a roben arrou, bep a « gorsaj » gwenn, ha bep a vanegou hira da dapout betek o ilin. Panevert d'o stumm, hag a oa chomet bepred hini tud diwar ar mez, 'm ije kemeret aue 'vit ar c'hanerezed a deu, d'an hant, war an ocheon da ganen en hostalirioù. Mes o c'homzou hag o c'hizion a oa c'hoaz kalz fentusoc'h 'vit o gwiskamant. Goude bean stouet diragon, an hini henan, Matild, hag a zo daou vla kosoc'h evidon, a zigoras dor eur zal hag an fedas da vont ebarz, mar plij, *Mademoiselle ma cousine*. Ne roas d'in na pok na seurt. Me 'n em gavas 'zen pof ha pa vijen bet en palez an Elize, dirak prezidant ar Republik. Servijet e oa neuze te ha gwestel lin, ha ma diou geniterez a stagas da gontan d'in, en eur c'hragouilh, hag en eur ober pep seurt ardon gant o fenn ha gant o droziarn, eur brentre kemeret gante diwar ha *Mode du Petit Journal*, evel pa vijen bet eur gemenerez ha nau o c'heniterez.

Oamp oc'h achui, pa deuas ar vatez koz er zal: trei a reas ouzin hag e lavaras n'ouzon petra; mes Matild, et drog enni, a gaozeas rust outi hag he c'hasas ermeaz. Me zantas ma gwad o yennan. Sevel a rejomp 'n hon zav.

— Ha ma eontr, emeon, n'hen gwelin ket?

— 'Man oc'h hadyernian 'barz ar gegin, eme Rose. E-berr d'an noz hen gwelfet, rak breman eman oc'h ober pep seurt labouriou...

— Me ya da vont raktal, emeon. Ha me d'ar gegin, o lezel aue o-diou da 'n em zellet.

— *Bonjour*, ma nizez, eme unan koz a oa o tibri kig dindan e veud e penn an dol; deut e oas da welet ac'hanomp?

Ar potr koz a lavaras kement-man hanter galleg ha hanter brezoneg, hag o poz e gig hag e vara, e teuas da boket d'in ha d'am stardan etre e ziou-vrec'h; me a boke d'ean ive kalonek, pa glevis diou vouez c'houermous drek ma c'hein:

— *Oh! papa!*

— Me a dizroas hep sonjal:

— *Eh bien quoi! il m'embrasse!*

— Lous evel mac'h eo!

— O! 'meon, me oar a-walc'h e renker war ar meaz ober pep seurt labour, ha n'haller ket bean bepred fichet eveldoc'h, ma c'heniterez.

— O ni, eme, a zo bet er gouent hag a zo bet disket d'imp bean propr. Ma karet, eme Matild pignal breman d'ho kambri.

Me wele a-walc'h o devoa 'n em glevet o-diou da laerez ac'hanon digant o zad, abalamour ma labour, ne oute ket a c'hallez ha ne oa ket bet er gouent, ha da zerc'hel ac'hanon gante pen-da-ben, da gomz eus Pariz hag eus *Mode ar Petit Journal*. Respont a ris:

PEDER C'HRAS !..

(Kendalc'h)

— « Asa, a lavare Marc'harid eur wech m'oa gelllet benna Perig diouz an armel, deomp da welet breman petra 'zo en armelion all... »

Leun e oant holl, hag en he him Marc'harid a gavas, ouспен dilhad, teir yalc'had : eur yalc'had aour, eur yalc'had arc'hant hag eur yalc'had moneiz. Pividik e oant !

— « Asa, eme Jakez, breman en nec'het o klask petra da c'houlenn war diweza troad al leue. »

— « Nec'het ! Allo 'ta ! Deomp d'ar c'hraou, ha goulenn ar c'hras m'hon do liorzou kaer en-dro d'hor maner, seiz bioc'h da rei leaz d'eomp hag amañ druz, hag eur c'hraou a zoare d'o goudori eur wech deuet an noz.

Hag ez ejont d'ar c'hraou war ar geriou diwezaman evit trec'hi diweza troad al leue. Ne badas ket pell, rak ar gontel n'oa ket dilem c'hoaz na Jakez n'oa ket skwiz oc'h ober troc'her kig. En dro d'an ti ez oa liorzou kaer, meur a zevez arat dindano : plant yaouank, gwez avalou, per, hag all, bleunioù, legumachou, en em douezie eno hag a rea alazig an eil d'egile, hejet ha dihejet ma 'z oant gant c'houez an avel nevez-amzer. Eun dudi oa gwelet seiz bioc'h velen o peuri ar yeod druz e-mesk ar gwez hag ar plantennou-ze, hag eur c'hraouig seder e korn eul liorz adrenv an ti, boued nann abenn ma teuje ar zaoud da glask o lojeiz.

N'oa ket diwezad c'hoaz, hag an heol a bare seder war an donar. Jakez ha Marc'harid na skwisjont ket, gant o bugaligou, o chom eno betek an noz da eva, leiz o ginou, ar c'houez vat a dene diouz ar bleunioù a bep liou. Ar vugale a gemere o flijadur oc'h en em ruiha e-touez eur bochad bleun-brug a oa tost eno.

Kuz-heol a deuas hag eno e oant c'hoaz !..

Marc'harid he doa sonj ober poan-gof gant he zi nevez d'an aotrou Krogmad ; d'an itron Krogman eo e reas ar maia. Houman a veac'h savet ens he gwele antronoz, a lavaras d'he fried :

— N'hellan ket kompren penôs o deus bet Jakez ha Marc'harid eun ti ker brao hag a ra mez d'hon hini...

— Ha goude ?

— Ha goude ? eme an itron gant fulor. Ha goude ? N'eus ket a voien da jom evelse. Red eo d'in gouzout penôs en deus bet Jakez an ti-ze hag e holl arrebeuri abalamour d'in d'ober eveltan !.. Kea buhan dustu da gaout Jakez da c'houlenn outan penôs en deus bet e holl draou, rak n'hellan ket padout, nan ! nan !.. Red eo d'in gouzout... Ya, ya, gouzout a rin e giz pe c'hiz !.. Klevet a rez ! klevet a rez ! kea dustu !..

— Chom peoc'h, sodez, a responte Krogmad, daoust hag ezom az peus da c'houzout ar pez a dremen e tiez ar re-all, na penaos eo deut o danvez hag o finvidigez ?

An itron Krogmad a wasae atao he zerzien. Eur plad bennak en doe ar gwalleur da veza etre he daouarn ; e deurel a reas war al leuz-zi, ma oa bruznet e mil dam !..

O welet penaos e troe ar grampoezen, Krogmad a zonjas e oa ar gwella d'ezan mont da gaout Jakez, evit kaout peoc'h gant e wreg.

Oc'harrout e Kerdreut e welas Jakez oc'h heolia en e liorzou. Mont a reas d'e gaout :

— Me zo souezet ganes-te, souezet-maro soken o welet penaos ec'h eus gelllet kaout eur seurt ti, eur seurt arrebeuri, eur seurt liorzou kaer gant seiz bioc'h velen, eun dudi o gwelet, te hag a oa dec'h vintin o c'houlenn an aluzen e toull va dor ?

— Ya, te didruez ha digalon, stag ouz madou ar bed-man, te az pens bet ar grisderi d'am c'has kwit diouz toull da zor, hep rei d'in memes eun tam bara. Mes goude-ze ma 'n eus kavet war va hent eun den koz hag en eus roet d'in ar voien

da veza ar pez ma 'z ou breman !.. Hag e lavaras da Grogmad ar pez a oa en em gavet gantan en derc'hent hag emac'h o pouez gwelet.

An aotrou Krogmad a zizroas d'ar gear da gonta d'e bried ar pez holl en doa lavaret Jakez d'ezan.

— Kea 'ta neuze ive, eme an itron, dre ar memes hent ha Jakez. Marteze ec'h en em gavi gant ar c'hoziad ive.

— Ya, mes n'em eus ket a zilhad fall evit-se !..

— Ker'h eur re zilhad ha faout anezan gant eur vouc'hal... goude lez an tammou da istri-bilhat.

Evel-se e oa greet ! Krogmad a yeas en hent, eun tam bisac'h fall gantan war e gein. Kemeret a reas hent ar Pont'las, hag erruet tost d'ar feunteun ec'h en em lakas da ouela a foiz. Eun den lez — ar memes hini hag a oa en em ziskwezet da Jakez — a c'houlennas outan :

— Perak e ouelit, va den mat ?

— Me 'zo o vont da glask an aluzen hag em eus aou da veza nac'het gant an dud pa 'z in d'o ziez... Koulskoude em eus ezom aleis, rak eur bagad a vugale am eus da vaga.

Eul leue bihan bennak hoc'h eus ?

— Ya da ! bez' em eus unanig disterik du-hont em c'hraou.

— Mat ! it eta d'ar gear, lazit ho leue, troc'hit d'ezan e dreid ha goulennit eur c'hras war bep-hini. Selaouet mat sur e viot... mar doc'h gwir ezommek !..

(Da heuilh).

DIRLEM.

AN TOURIG KOANT

D'an aotrou Gah Liskildry, barz Runan.

N'eus netra kaer en Breiz-Izel
Evel eo ma zourig uhel ;
Loul, loula deri tra,
Stignet mat ha kizellet c'houek,
Dimens an troad betek ar beg,
Nan eus netra ken drant
Ha ma zourig koant.

Ouz e zellet, pebez dudi !
Biskoaz n'em oa gwelet kloc'h'di,
Loul, loula deri tra,
Turgnet en mein benerez koz,
Testeni feiz hon zadou koz,
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

Kenta tour 'do savet ma Bro,
Re lor'h da Vreiziz tro war dro,
Loul, loula deri tra,
An tourig koant, tost d'ar Yeodi,
Digasje souj d'imp da bedi,
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

Bep gwech, pa deu e gloc'h da zon,
'Vit re varo goulenn pardon,
Loul, loula deri tra,
Ar beden ya sioul en er,
War dioneskel an al'houeder,
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

An dudi 'vit ar re veziet
Ez eo bean holl douaret,
Loul, loula deri tra,
Ouz treid tourig kaer a Runan,
A disheol 'ne bras ha bihan,
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

Eus a bell 'teu kantroerien,
Tud disket ha skriyanierien,
Loul, loula deri tra,
Da welet an liz vrudet,
'Zo 'tal an tourig unan zavet,
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

Lies a wech em eus sonjet,
Dirak an tour p'oun tremenet,
Loul, loula deri tra,
'N eur barz an eus rimet sonio,
Evit meulodi Breiz, ma Bro,
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

Pa vin maro, vin douaret,
Dindan an-tour, 'n korn ar vered,
Loul, loula, deri tra,
Rak e gliser, pa voint hinjet,
A zono 'vit ar barz kousket...
Nan eus netra ken drant,
Ha ma zourig koant.

Traou Yeodi.

NOMINOE TAD AR VRO

D'ar c'houiz-se hon Mam-Vro, saezus en he braz-
[der,
'Chelle kemerout plas 'touz ar broadou all,
Rak eur roue dispoat, kardek ha leal,
Hanvet Nominoe, he sturio gant preder !

Dre ijin e spered ha nevez e galonder,
Rei a reaz d'ez he Frankiz a-wechall !
Pa finve beg e viz, hepken, Charlez Ar Moal
A grene gant ar spont, en despet d'e Veurder !

Trec'h eo bet an pep lec'h d'ar Fransijen divez,
Hag e-kreiz emganto spontus ha dizivez,
'N eus lemmet digante meur a vro dudies !..

Red eo eta d'imp-wi, Bretoned didred'hus,
Delc'her souj anezan ! rak hep e youl hon Breiz
A oa da Vro-C'hall goue, siouaz taolet en preiz !..

MATHALIZ.

AR MOR

Ar mor don islonkus ! mor yud ! mor disleal !
Pa glewan da goumouo gwapaüs o youc'hal,
En dro d'ar c'herieg du a gouriz va Bro gazez,
Raktal e sav d'am fenn tan ar vuanegez !

Hep abeg noz ha deiz, nag a verdaidi,
A debrez gant eurvad siouaz ! ha gant dudi !
Nag a daerou c'honoro a lakez da redek
E-touez an Arvoriz nerzus ha talvoudek !

Petra, lar d'in, 'zo kaoz, ma 'z out ken didruez,
Ken diwad ha ken fall 'n o c'heuver, o mor goue ?
Penegwir droag ebet d'it biskoaz n'o deus gret !

Spontus ha dinatur e kavan da grizder,
Ha n'ez oun ket evit gompren perak bepred
E karont c'hanout gant kement a douder !

MATHALIZ.

AR VAM HAG HE BUGEL

Hag-en 'zo d'al legad koantoc'h,
Ha da galon an den c'houekoc'h,
'Vit karanteziou, allazig,
Mam o vousc'hoarz d'he bugelig ?
Raphaël, al liver ijinus,
A gave meurbet dudies
Eus Jezuz gant Mari ar gwel,
Eur vam ez oa hag he bugel.

Pa deuas ar frouezen dizeur,
Da roi d'ar maro e eur,
Prim diskaret, an den kenta
A rentas poanüs ar beva.
Stad an dea meurbet ezomk
A druezas 'n Holl-C'hallondek :
— « P'ou, emean, zeuy d'hen adsevel ? »
Eur vam ez oa hag he bugel.

En amzer ar brezelliou kriz,
Hag a rentas ken izel Breiz,
Ma oa e Roazon diskaret
Baniel ar prinz, ar sondaudet,
Hor bro oa warnez mont da goll :
Eun elig 'ziskouezer d'an holl,
Hag Arvor a zav he baniel
Dre zorn eur vam gant he bugel.

J. C.

EUN DEVEZ A EURUSTED

N'eo ket gwall-stank, en amzeriou a zo o ren. lanvyl ar peñs ar gwir eurusted.

Eun dra eo, koulskoude, klasket bemde gant an holl dud, hep hen kavet, sionaz!

Hon tadou koz o devoa, koulskoude, pleustret mat d'imp ar gwir hent evit hen kavet, er bed-man hag er bed-all. Ph'on deus bet ar gwall-eur da nem goñ er gwennojenou a gas peurvuian d'an denvalijen, d'imp eta eo d'ober evel eur besjour, distrei war hon c'hiz, en berr amzer, da glask ar rouden vat.

Ar rouden-ze, ar wenojen-ze, an hent-ze pleustret ken reiz gant hon zadou eo an hent a gas d'hon ilizou, d'hon chapelioù, d'hon fardonioù.

Ne rafen nemet hadlaret d'ac'h aman ar peñs hoc'h eus klevet dija diwarben hen fardonioù. Ne gemerit ket eur hoan didalve evidon hag evidoc'h, o laret eo bet kaer kaer ar pardon em farouz Mikel, disul ar c'hentan a viz eost.

Kaer eo bet dreist d'ar peñs a halfe ma zammig spered disrevel, gant lidon sort marteze nan eus bet gwelet biskoaz hon tud koz arók d'imp; kaer an oferou, gant avieler hag abostoler, gant an an iliz ken koant, gant ar c'horn, ar gauerien; kaer gant ar zaimon ken kalonek, en eur brezoneg digailhar, evel ma eo hini hon mignou gwella, an otraou Péchoux, chaloni, person kanton Rostren; kaer ar gousperou, ar prosession, an tantad gant e dennou ken stank, da dihuni spered ha kalen ar muian kaledat. Pep tra a oa dudius pen-da-hen, eus ar beure betek noz; anez se, n'hallfen ket henvel an devez-man eun devez a eurusted.

Anavout a ran mat ma farouz, gant he zud bet a-viskoaz gwir vugale da Zoue ha d'an Iliz. Anavout 'ran azevi, evel eur boket roz en liorz Breiz-Izel, o sevel gonstadik d'an env c'houez vat he fe gristen, he gizioù koz ha far. Sonjet am eus bet, koulskoude (prou on war ar poent-ze) gwelet koummodu da o sevel a-us d'hon fonn, zoken zonet am moa gwelet morennou tenval o sevel en dremwel douget gant an avelioù da gouezan war hon farouz, war hon Breiz; evel eun haden a ziwan warnezi, gizioù neve a deul d'ar fin eur freuz meurbed c'houero da vongan pep tra mat, ha fur. Hunvret am oa... o! gwel a-ze! Ar c'hounmoul, ar morennou, ar gizioù neve, ar freuz c'houero a zo ét gant an avel; ha ni a vir hepred hon spered yac'h, hon bne didrabas, hon yaouankiz fur, hon c'hozi santel. Ar rozenig flour ha tener a zispak he delioù koant a-ziudan glizen frask grason Doue. Hon farouz a vir gant pep dudi he eurusted!

Eurusoc'h kalz on bet aman evit en meur a bardon-all, rak n'am eus ket gwelet (o tra poanuis!) hon gwerchezed yaouank, hon fótrez vat o tilezel, evel 'm eus gwelet en meur a lec'h, servij an Otraou Doue evit monet da 'n em vastari en servij eun den a evaj, da glevet, da welet, da vean test epad devez ar pardon, eus ar peñs-hejoul-ze, ar vevenli, al leou-douet, ar sakreou, ar c'hounjou hudur, ne glever ken nemele gant an dud a evaj. Eno ema bet eun tam eus ma eurusted. Gwelet a ran gant plijadur n'eman ken en spered hon merched yaouank ar zonz, penós an nep n'eo ket bet en hostaliri, devez ar pardon, o lakat hini krenv pe douz pe c'houero en gweren Yan, Pipi pe Jakez, na gavo ket eur galant a fortun.

Kendalc'homp, o Mikeliz, war rondou hon zadou koz, en hent an Iliz, en hent an onestiz hag ar furnez. Kendalc'homp gant hon lidou didrous ha devot, ma vevo bepred lqun a sked hag a c'heñed ar rozenig dadins diwanet en liorz Breiz-Izel, da c'hortoz ma koueo he delioù en poultren, evit sevel en ér, da vont da beurdarean d'ar Barodoz.

Ha c'honi, paroziou-all ma Breiz, mar oc'h ive koant evel ma farouz, bezet unanet ganti ha kemeret lod en hon eurusted; dorn ouz dorn e vefomp krenvoc'h; mar oc'h muioc'h poultiennet gant ar gizioù neve, mar eo tanvaloç'h an oabl a-us d'ho penn, sellet hon farouz gant dudi, gant ar c'hoant na savo ive eur vouezig bennak krenvoc'h evit ma hini d'ober d'ac'h oll eur meulodi dleet, herve ar wirione hag ar lealdad. O neuze stereden ar fe a lindro muioc'h splann en oablou digoumoul!

Neuze daoulagad an oll Vreiziz a zavo d'an env hag hekleo ar c'hoad bras o respont d'ar pedennou, d'ar c'hantikou, da zoneri ar c'hleier en tourioù dantelezet, a laro da bep kristen gras, bennoz, eurusted!!

BRETONED BREIZ

er bla 1906

Côtes-du-Nord. — 611.506. — *Dinan*, 119.537; *Gwengamp*, 128.338; *Lannou*, 102.479; *Loudéac*, 87.355; *Sant-Briek*, 173.807.

Finistère. — 795.103.

Ille-et-Vilaine. — 611.805.

Loire-Inférieure. — 666.748.

Morbihan. — 573.152.

Da laret eo: tri vilion 258 mil 314 Breton.

Tennomp al *Loire-Inférieure*, an *Ille-et-Vilaine*, eun hanter eus ar *Côtes-du-Nord*, hag eul lod ens ar *Morbihan*, hag e kavomp a zo en Breiz war dro eur milion hanter a Vretoned oc'h c'houzout ar brezoneg.

BREC'H-HELIAN

Da Even (Kav-e-Vre)

Pa vez bras an tomder me gar neuze monet

Da leun, pell diouz pep trouz, en koad Brech'h- [Helian,

Euo, en dished fresk e zero e klewan

O hirvoudi mouezioù an amzer dremenet!

Nag a varzed a-bed e wenojennou moan

O deus taolet d'an ne'o barzaz entanet.

Nag a varc'heien ter ivez a zo ganet

'N e greiz evit diwall enor hon Breiz-Vihan!

E lannou torgennek, e draoniennou lirzin.

Hag e runioù 'vir c'hoaz, dinam, en o feuc'h dou,

Koun padus Vivian, Arzur-Mear ha Marzin!

Hag evel pa oant bev, dour feunteun Baranton,

'N eur boka d'he brugou, a gàn ato laouen,

Noz ha deiz hep ehan, he zammig kanaouen!

MATHALIZ.

Ar beleg hag ar ministr protestant

E meur a garter a Franz ne gemerer ket ar vinstred, ar bastored protestant evit ar peñs ma 'z int. O c'hemeret a reer, peurvuia, evit eur seurt beleien, evit tud kensakret da Zoue, evit mistri en afer ar Relijion.

Mes petra eo ar beleg? Eun den kensakret holl da Zoue, dre Sakramant an Urz, resevet digant eun Eskop a ro d'ezan, en hano Jezuz-Krist, eur merk santel ha n'hell ket beza lemmet diwarnan, gant an dever, ar garg da gelen an dud war al lezen gristen, da lavaret an oferou, da rej ar pardon eus ar peñs-hejoul, da zantellat ar gristenien-all. Dre sakramant an Urz an den a zeu da gaout veza e galloud Jezuz-Krist war an eneoù, a zeu da veza great beleg evit ato: *sacerdos in aeternum*.

Ha petra eo eur pastor protestant? Piou hell el lavaret mat a-walc'h? Ministr protestant Pariz n'eo ket ar memes ha ministr protestant Loudrez, ha, zoken, an eil hag egile a zo dishenvel diouz ministr protestant Berlin. An den desket Joseph de Maistre a lavar gant eun tammig fleun: « Eur ministr protestant a zo eun den gwisket a du hag a ro da glevet d'an dud, d'ar zul, komzou honest. » D'am zonz-me, eur ministr protestant a zo eun den hag a gemer ar garg dreizan e-unan, da gomz eus a religion; rak na Doue, na Pab na aotre anezan d'ober eur seurt labour, kablus bras a rank beza eul labour graet a-dreuz evel-se dre ma tenn da zistruja al labour kommanset gant Jezuz-Krist e-unan, e gelennadurez, ha koeza a ra dindan an Eskumungen douget gant sant Pól enep nep piou bennak a brezego kontrol d'an Iliz a behini ar Pab eo ar penn. Ar ministr protestant a ra labour a-dreuz, dre ma leun a douez an dud ar gwir feiz, ar greden gant an oberiou. Beza a hell beza den honest en e berz e-unan, mes e

labour a zo fall, hag eun dismeganz vras eo evit ar gwir Relijion gwelet lakat ar ministr protestant skoaz ha skoaz gant ar beleg.

Kaout a reer Protestanted hag a zonz d'ezo koant ar religion vat, ar gwir Relijion; ar peñs a vir outo d'an enenta kristennoù Katolik, eo ahalmeur ne nitavezont ket kelennadurez an Iliz santel katolik, evel ma lavar an den desket bras Bossuet. Ped ne gaver ket en o zouez hag a gred e ador ar Gatoliked ar Werc'hez evel eun Doueez! Ped-all ne rebechont ket d'emp, e faoz, da adori ar Pap, da werza korf ha gwad Jezuz-Krist, da douc' arc'hañt evit an absolvennou a ro ar veleien d'an dud, ha kalz traou-all ken faoz ha ken diot, hag all. Ar gwella levr d'an dud keiz-ma da brena, ha ne goust ket kalz a venneien, eo al levr *Katekis* a roer da zeski d'ar vugale.

KATOLI.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

PLEUVIAN. — Krouget. — Gwilherm Coail, oajet a 72 vla, a zo 'n em krouget, o vean re skwiz gant ar vue. Mes warlerc'h ar vue-man 'zo eur vue-all!

PLOUARET. — Tan-gwall. — An tan a zo bet kroget en ti forn Pierre Levier. Eur gambr a oa us, hag a zo bet devet enni daou veta. Mes dre ma zo bet digoneet zikour vat, an tan n'e ket bet et pelloc'h.

ENEZEN BREHAT. — Beust. — Ervoan Pellec, eus Lezardreg o chom en Brehat, a yec disul trezek ar mor 'n eur laret ec'h e da 'n em veui. Tennan reas e clupen ha 'n em dol en dour. Tud a diredas 'vit hen sovetat; mes pa oe tennet ermeaz, e oa maro. Pellec a oa meo.

PLIEN. — Maro war an hent bras. — Mari Barbu, oajet a 60 vla a oa o labourat war an est e ti Lucas, labourer. D'abarde e tizroas d'ar ger 'vit ober diouz he beuc'h. O welet ne dizroes ket d'he c'hoan, tud a yeas d'he c'hilsk hag he c'havas maro war an hent. Klanv oa boue pell 'zo gant an drouk-kalon.

BREIZ-UHEL

DINAN. — Daou veuet. — Disul d'abarde, an daou vreur Chaffotec, unan zoudard egile martolod hag eur plac'h eus Dinan a oa et o zri da vale en bag. Tog unan eus an daou bôtr a goueas en dour. Kas esat tapout anean e kouejont er mor. Daou ane, ar plac'h hag ar zoudard a oe beuet.

GOULENNIT

E Ti-Moulerer Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Aciel katolik, gant an aotrou abad	
Bizan, goloenn kartons ha skeudennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegenn war Brez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneq.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneq.
Buc sant Anton a Badou.....	3
Pedennouigou ha kelennadurez d'ar vugale.....	3
Merzerenti an Tad Perboar.....	1
Buc an Tad Perboar.....	1
Al lez.....	4
Meulodi al labourer.....	1
Gwerz sant Mito.....	1
Gwerz sant Koneri (skeudennel).....	1
An diabol-paotr.....	1
Kan an Islanded. Kentoc'h mervel. Peden ar cartoloded. Gwerz sant Kemo, hag all.....	1 daou erit.

Eun diskenn war ar pris evit am eur hini.

E GWERZ: Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skriuan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

— Me yaje a-walc'h d'ober eun dro da welet al boened?

Ha me er porz, ha tresek ar marchosi, gant ma potou-ler ha ma dilhad kaer. Rose ha Matild a estlamme diwar drenjou an ti. Dont a rejont koulskoude betek kreiz ar porz, mes ne gredjont ket gant o botou-ler melen tremen ar bern teilh hag ar poul hawa.

— Vous allez vous salir!

Me a c'hoarze hag a zonzje: Pa vin skwiz gante, me deuto da vale endro d'an teilh, ha neuze 'vin dizammnet.

Mont a ris d'ar marchosi elec'h ma kleven trouz. Ma c'henderv a oa o lakat boed d'eneval. Chom a reas mezek da zellet ouzin; mes o welet e oa tapet war e labour, e chanchas giz hag en em lakas da c'hoarzin.

— C'houi, 'm eus aon, emean, n'oc'h ket 'vel Rose ha Matild; an diou-ze, aboue int diro eus ar gouent, n'o deus ket laket o fri e kraou ebet aman, nemet bepred en kamb, o kanan, pe oc'h ober dantelez. Mes c'houi, dre ma 'z oc'h kustum da vean zerret en kamb du-ze, en Pariz...

— Me, emean, zerret en kamb? Naa, a drugare Doue; me, du-man, er gêr, a ra ar gegin bemde hag a ya d'ar marc'had.

— Ha gwir? Me grede d'in oac'h eun dimezel...

— Ar merc'hed yaouank en Pariz a labour, ha n'o ket eun tam bihan! Na pe n'o deve na moc'h na zaoud e kavont ive pep seurt da veskan.

Setu me laket ma c'henderv sonezet. Pa oan o vont ermeaz ar c'hraou, ec'h aruas ma contr.

— C'houi, da vihanan, ma nizez, emean, ne spontet ket dirak eur bern teilh...

— Me, 'mon-me 'n em blijfe kalz war ar meaz.

— Ya, mes n'ouzoc'h ket a vrezoneg.

— Deski a rin!

Da goan, e oe aotreet d'o zad, gant ma diou c'henitervez, dont da zibri d'ar zal, daoust d'e votou koad. Pa oe digaset ar c'hafe, Matild a bedas ac'hanon da ganau eun dra bennak. Me, braou tra a gavan eo ar *Biniou*, abalamour ma tigase zonzj d'in eus ma bro; ha me da ganau ar *Biniou*. Ma c'henderv a gavas brao an tou hag ar zôn, hag an diou blac'h ive, mes gant eun er da lavaret: « Ni a oar kaeroc'h 'vit se! » Difinet eta, Luci, petra a ganjont? Biken n'am ije kredet! Rose a ganas *la Ronde des crevettes*:

'Wherné ghernas mayou,
La crevette du gué crêvé...

An dra-ze, emei, he devoa desket gant eur c'henderv d'ei eus Pariz; ha Matild a ganas *la Sérénade de Mireille*. C'hoant o devoa d'ober moueziou 'vel ma ra kanerezed Pariz, mes Matild ne oa ket uhel a-walc'h he mouez, hag am oa mil boan o harz da c'hoarzin, pa welen anei kas pakan an notennou uhel ha ne oa ket 'vit ober.

Pa oe fin d'ar merc'hed, ma contr koz a lavaras:

— Ma emean, me ya breman da ganau d'ac'h eur zou vrezonek, unan 'boue gwechall-goz, *Zon ar miliner*. Mes a-boan e oe d'ar gitez Matild bean klevet ar poz kentan, ma lavaras d'he zad:

— Trawalc'h, ma zad. Ma c'henitervez eo gwel ganti klevet ireo gallek, treo flour ha dilikat, 'vit n'eo klevet treo goue evelse...

— Naa, avat, emean, me gav brao ar zon-ze...

— Ya, a lavaret, emei, 'vit ober plijadur d'am zad; mes an treo-ze n'int mat nemet da spontan bugale pe da zeri ane da gouset.

War ze, ma c'henderv a zizroas:

— Ma, emean, me wel eo kentoc'h stummet ma c'henitervez d'ober eur goueriadez 'vit nan out te! Me zo ali e chomfe aman ha te yei da Bariz.

Ar pred a achuas trist a-walc'h, gant ma eontr koz lenvalaet o welet oa bet harzet da ganau e zôn vrezonek. Evit gwir n'e ket hen a zo mestr; Mathild a ra he fenn, hag hen, fouge ennan, o kaout eur verc'h desket war gizioù kêr, a lez anei da lakat he fri en pep afer.

Me ne oen ket pell o vean rukunet ganti ha gant he c'haojou hag he vrezhou. Keun am oa d'am eontr, d'am c'henderv ha d'ar vatez koz, mes bepred ne oan ket 'vit chom ken, hag abenn eiz da e skrivis d'eur c'henderv-all dont da ger-c'hat ac'hanon.

Kenavo eur lizer-all da gamaradez Tereza.

SETU MA BUE! SETU MA EURUSTED!

War dôn: *Er Finister.*

D'ar Renerien.

Ma zremm a zo c'hoaz re denerik,
Ma lagad na wel ket gwall-bell,
Dinerz eo ma dorn a vugelig
Da zifen kaoz hon Breiz-Izel,
Ha kalz ouz ma mouez
O deus gwaperez,
Me 'ziverglo ma fluen gant levenez,
Ma fell d'in gant ar varzed
Kanan d'am Bro garet!

O! na pebez eur-vad am eus bet
Da gaout eun tad, eur vamm vat,
Kristenez gante ez ou savet,
Penôs dont d'o zrugarekaat?
Bepred e sonj d'in
Klevet d'ar mintin
Mamm dener o laret gant he mouez lirin:
Ma bugel, karet Doue
Hag hou bro Breiz ive!

Ma zad na groze ket alies,
Koulskoude, evit ma doujan,
Pa zave rust e zorn pe e vouez,
Ma c'halon goumanse kreuan,
Rak d'ar mare-ze
'Ouien ket ive
E oa talvoudek kelez ar vugale,
Ha me a skuilhe daerou,
O kwitlat ma zechou.

Ma zikouret breman, o Jezuz,
Ha teneret d'in ma c'halon,
En-kenver an dud madeleuz
Diskas d'in ma relijion;
Pastor binuiget,
Ha kement karet,
Ouzoc'h me 'mo sonj keit ma vin war ar bed,
Pedet ive, tad santel,
Pedet 'vit ho pugel!

Eur vestrez vat he deus ma disket,
Hag, hep noazout onz ma ine,
War draou ar bed on sklerijennet
Evit gouit ma zamm bue,
Me 'mo sonj, ya zur,
Eus 'n aliou fur,
Am eus bet klevet diudan he renadur,
Ha gwech ha gwech an amzer,
'Skrivin d'ei eur lizer.

Ha c'houi breman, ma eontr kalonek,
Pan on en ho servij bemde,
Me a bed ar Groazig vrezonek
Da laret d'ac'h ma c'harante;
Pa lenufet d'an noz
Bue hon zent koz,
Ma c'halon drido 'sonjal er baradoz,
Hag em spered a vugel
'Savo sonjou santel.

Ar beden a ran d'ac'h, o barzed,
Da sklerat ma mankou, pa vo red,
Astenet ho torn d'am zikour;
N'am eus 'vit madou
'Met ar mennoziou,
'Ziwan en kalon heil dud hon meziou:
Gwelet hon Breiz dishual,
Hag ar Vad trec'h d'ar fall.

Françoise NICOLAS,
Merc'h Breiz-Izel.

EUR VADEIANT

Sonet, kleier, skiltrus-sonet,
Eur bugelig a zo ganet,
Kartilhonet drant ha joaz
D'eur c'hristenig grot da Jezuz.

Hirie an de vo badeet;
Lok da bueson zo klasket;
Bea 'n evo vit maeronez
Merc'h ar sturier, Loeizà gez.

An oabl zo pur hag ar mor bras
A ziruilh e wagennoù glas;
Arru eo an neve-amzer,
An heol lintrus 'd'arz e domder.

Ar vaeronez a zo seder,
Gant he zae gwenn an deou kaer,
He davanjer zae marellet,
He broz gant voulouz bevennet.

Eur vedalen a enor
Geneet gantan war ar mor,
A luf war chupen ar paeron
Lemm a spered, den a galon.

War an douar, pell zo amzer,
An tadig koz nag ez eo kaer,
Gant e vle hrr hag ar c'hantet,
Gant e dog-voulouz rubanet.

E val bihan vo 'n e gozni,
'Vit hen harpan, pa n'helo mui;
Hen zerro d'ar paour kez koziad,
Gant e zorn flour, e zaoulagad.

Seder e vo 'vel e vamm vat,
Kreny, kalonek evel e dad,
Deski a rey pa vo skolaer;
Ha pa vo bras, e vo moraez,

En eur dremen dre ar vered,
Ar merc'hed 'deus o fenn pleget,
Ha gret eur beden 'n o c'halon
Vit vo pardonet an Anaon.

Mont a rer ebarz an iliz;
Pop-hini 'bed, herve ar c'hiz;
Dremm joaz an otro person
'Zo diroufennet, en gwirion.

War rôk, paeron ha maeronez,
Gouennet 'vitan ar furnez,
Gras da droi kein d'ardou Satan,
Ha da vean bepred dinam.

Laret ar *Gredo*, ar *Bater*,
'Vit tennan bennoz Hon Zalver
War ar bugelig, ho filhor,
Ma vo bepred den a enor.

An dour war e benn 'zo skuilhet:
Badeet eo 'n hano 'n Drinded,
Gret gantan eur c'hristen gwirion,
Mah da Zoue en tri ferson.

Sonet skiltrus, kleier santel,
Sonet drant 'n enor d'ar bugel...
C'houi, paeron, bet ho yalc'h digor,
Rak me wel tud en toull an ner.

Nag a zorn a zo astennet,
Nag a c'heno 'zo digoret,
Me a lenn freaz en holl zellou:
'Roet d'imp kalz a vadigou!

« Rak ho filhor a zo roue,
Mah d'ar Werc'hez ha da Zoue,
Bezet ho kalon digor frank,
En enor d'ar c'hristen yaouank. »

Evurus ar vugaligou,
Rak puilh e koue ar madigou,
Ma lavarent gant levenez:
'Bevet pell ar c'hristen neve!

Person Tredrez.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant: P. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bre-C'hall.
2 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENEGEREN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBRANNOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer aez :

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Fennek An Gaez.
Gant brezonek eo doue ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.
Fennek An Gaez.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het.
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'he di
MILIN.

EVIT " BREURIEZ AR BREZONEG "

Jozefin Milon. 2 spilhen arc'hant
evit c'hoari-zac'h.

Setu aman eur skoner vat evit mignoned ar Brezoneg.

Arc'hant ha trec-all, pep tra a ve digemeret gant Breuriez ar Brezoneg, ha pep tra a zervij da gas ar Brezoneg war rök etouez an dud hag ar vugale.

Peziou-c'hoari neve-voullet

Peziou bet dija moulet en Kroaz ar Vretoned a zo laket en eul levrig marc'hadinat, (n'hallomp ket c'hoaz laret ar priz) hag a vo kavet da brenan adalek ar zun a deu en Kroaz ar Vretoned.

Ar peziou-man skrivet en yez Leon gant Klaoda a zo mat sur da vean c'hoariet gant bugale ha pôtrez yaouank. Dija ar Mevel laer a zo bet goulennet diganimp. An Ter c'had a zo bet c'hoariet nevé so gant Bretoned Pariz.

Roll Rakprenerien " Bleuniou Yaouankiz "

Dastumaden sonioù ha gwerzioù
gant AR YEODET

An Aotrone :

An abad Fleury, kure Plouaret.	1
An itron Bourdonnee, Tregrom.	1
Y. Ar Roue, Logivy-Plougras.	1
Ar Bricquir, Tregrom	1
An dimezel Francine Chossac, C'houerc'hed.	1
An abad Raoult, person Plougonver.	1
An abad Cousin, kure Plougonver.	1
An dimezel A. Menez, Plougonver.	1
An abad Bellec, person Treluder.	2
J. Belleguic, Douarnenez.	1
An abad Ar Meur, person Mouterus.	2

D'am Rakprenerien

Bleuniou Yaouankiz na vo ket prest, marvad, araoñ miz du. Roll ar rakprenerien a chomo hepred digor ac'han di...

Trugare a galon da gement hini an eus digaset e hano d'in. Eus ma zu e rin ma gwellañ evit lakât ma levr kaer, koant ha dereat.

Herve ma sonj, Bleuniou Yaouankiz a ziduo meur a hini enpad nosvezioù hir ar gouanv...

AR YEODET-BOCHER.

GOUELIOU BREZONEK

I. — BAULE

Ar 24 a viz est e vo gouelioù bras er Pouliguen hag en Baule koste Naoned, savet gant Kevredigez Breiz. C'hoariet e vo peziou brezonek gant Pôtrez Bignan, danset dansou brezonek, kanet sonioù brezonek.

Eur hobl vras a dud a vo eno, mes ne vo digemeret a ziabarz ar gouel nemet ar re a dougo gwiskamanchou breton.

II. — BLOUGASTEL

Eus an 13 a viz gwengolo betek ar 17 e vo gouelioù bras en Plougastel, e kichen Brest, lidou blaaveziek Kevredigez Breiz.

D'ar sadorn, da 10 eur beure, e tigorfont, hag e vo digemeret Kevredigez Breiz gant pennou-bras ker, ar muzik hag eur bagad tud war gezek.

D'ar zul ar beure, pardon sant Klaoda, ha pele-riñaj d'e chapel. D'abarde, da beder eur, pez brezonek gant pôtrez Sant-Vouga.

D'al lun ha d'ar merc'her, labour ha studi.

D'ar meurz, baleaden betek Crozon ha Morgat. D'ar yaou, devez bras ar prijou. Da gentan, vo roet an aluzen d'ar bevien. Goude, prijou 'vit kanerien breton. Kant pemzek lur ha triugent a brijou evite. Prijou ive d'ar braoan koefou ha gwiskamanchou breton a giz nevé. D'abarde, pez brezonek gant pôtrez Sant-Vouga ha prijou 'vit ar skrivagnerien brezonek ; — Eiz kant lur brijou.

Da glozan ar gouel, pred bras marc'had-mat, digor d'an holl.

ALI. — Bean 'zo hanter-kant skoad evit rei prijou : 1° d'ar skolioù o devo desket ar gwellañ d'ar vugale ar Brezoneg hag Istor Breiz ; 2° d'ar vugale o devo skrivet ar braoan lizerou en brezoneg.

Benn kentan bla, hon deus fianc e vo etouez ar skolioù kristen hag etouez bugale Breuriez ar Brezoneg deskamant a-walc'h war ar Brezoneg evit gallout gouñt prijou.

Pleel e vo e koulz, gant se.

Breman eta, pa haddigoro ar skolioù ar mestro ha mestrezed a vefe mat d'e kustumi ober lenn tammoù brezoneg, eun eur pe diou ar zun, ha, 'vit ze, lakat o bugale en Breuriez ar Brezoneg ; ober d'ar re-man hadskrivan bep sun, war ar c'haier a ve kaset da holl vugale Breuriez ar Brezoneg, eun 20 pe 30 linen kemeret diwar ar gazeten. Evelse e teskfont lenn ha skrivan. Ouspenn prijou Breuriez ar Brezoneg, ar skolioù ze hag ar vugale o devo c'hoaz prijou-all digant Kevredigez Breiz.

Pleel e vo e koulz, gant se.

Breman eta, pa haddigoro ar skolioù ar mestro ha mestrezed a vefe mat d'e kustumi ober lenn tammoù brezoneg, eun eur pe diou ar zun, ha, 'vit ze, lakat o bugale en Breuriez ar Brezoneg ; ober d'ar re-man hadskrivan bep sun, war ar c'haier a ve kaset da holl vugale Breuriez ar Brezoneg, eun 20 pe 30 linen kemeret diwar ar gazeten. Evelse e teskfont lenn ha skrivan. Ouspenn prijou Breuriez ar Brezoneg, ar skolioù ze hag ar vugale o devo c'hoaz prijou-all digant Kevredigez Breiz.

AR MESTR-SKOL GWECHALL

Mar zo er vro eur rummad tud hag a ra kalz a drouz eo, a dra zur, ar mestrou-skol.

An drouz a reont na lar ket, koulskoude, o deus muioc'h a dalvoudegez evit se. Eur varriken c'houlloù a ra dalc'had muioc'h a drouz eget unan leun ha talvoudegez an den a den eus e oberou ha nan eus e lorc'h. Rak ne fell ket ankouas penôs an drouz na ra ket a vad hag ar vad na ra ket a drouz.

Kement-man a lak ac'hanon da c'hoantâat ober eun hevelidigez etre ar mestr-skol gwechall hag an hini breman.

Ar mestr-skol gwechall na oa ket lorc'hus, mes e labour a oa pell gwelloc'h, pell talvoudusoc'h, rak hen a anvee,ervad kaerder e vicher hag uhelder e garg. Ar mestr-skol gwechall na gare nemet eun dra : ober e zever penn-da-benn ha beva direbech en-touez tud ar barouz ; e blijadur vije o welet pôtrez yaouank fur o tont eus e skol hag e lorc'h o klask fizianz hag anaoudegez an tadou hag ar mammou.

Pa ve sellet piz, karg ar mestr-skol a zo, en gwirione, eur garg kaer ha zoken pouner. Ar

mestr-skol a gemer lec'h an tad hag ar vam en kenver ar bugel, pe welloc'h, hen a gendalc'h labour an tad hag ar vam, hag e garg eo muioc'h rei d'ar vugale eur gelennadurez henvel ouz hini o zud eget n'eo diski ane war skiañchou ar bed.

Evel n'eo red, koulskoude, diski ar vugale war skiañchou ar bed, ar mestr-skol a dte ober d'an diskadurez ha d'ar gelennadurez kerzet war an hevelep tu, ma ne vezo ket an eil o tislaret eben, pe anez ar bugel a deuto da gavout diou greden : hini ar mestr-skol ha hini e dud. Etreze o diou e galon a vianskello eur pennad da c'hortoz teurel a goste ha kreden ar mestr-skol, ha hini e dud. Etre diou greden en ebiez, ar bugel na viro hini hag en em gollo.

Ar mestr-skol gwechall, leun a anaoudegez, a skiant-vad hag a furnez, a anvee e zever striz.

En e di-skol kenkoulz hag elec'h all, e gomzou hag e oberou a oa henvel. E vue a oa gwestlet da ziskadurez ar vugale, hag en pep lec'h, e welec'h anezan er pen-kentan evel eur skoner.

D'ar zul, elec'h bezan o spia an dud hag o tikrial an ofisoù, ar mestr-skol koz a vije en ofereñ ; heuilh a re pep prozesion, pep gouel, hag alies memez e kemere peurz ebarz ar gao evit rei ar dorn d'ar veleien ha kaerât lidou an lliz.

Den na gave ze disnegansus, rak, pa vent intentet mad, karg ar beleg ha hini ar mestr-skol o deus kalz a henvelidigez : karget int o daou eus mad ar spered hag an ine.

An dud, eus o zu, a gare kalz ar mestr-skol.

Na pred, na gouel, badeziant, eured, de ha bla, n'o dije lec'h hep gouzout d'ar mestr-skol. Eus koste ar person e vije dalc'had miret e blas d'ezan hag an holl o doa outan kement a zoujanz hag ouz ar beleg.

Ar mestr-skol gwechall a oa karet ha penôs ne vije ket ? Hen na oa ket eun divroad en touez an dud. Elec'h gwapaat gizioù ar vro e kare ane, e heuilhe ane hag e veule ane.

Ped ha ped mestr-skol n'hon deus ket gwelet gwechall ebarz an eurejoù o sevel da gentan evit kana eur zon brezonek ? Alies zoken — henvel ouz Eostig Koat-an-Noz (Ar Yan, eur mestr-skol gwechall) e plije d'e ober eur ganaouen-eured d'ar prijoù yaouank...

Evelse ar peuc'h a rene er parouziou. Maer, mestr-skol ha person a gerze dorn-ou-dorn, ha ne welemp ket neuze ar gasoni o sevel nag ar dizurz o ren.

Gwechall pa deus an Emzeller (Inspecteur) d'ober e dro, e tiskenne da gentan en ti ar person ; an aotro person hag hen ac'h e da di ar maer, hag ac'hane ac'h ent o zri da welet ar mestr-skol.

Perak na gerze ken ar bed evelse ?

Perak na mestr-skol, elec'h bezan den eur gosteñ, na vefe ket mignon an holl, seul aketusoc'h gant e vicher ma ne dle kavout nemet eur reolen-vue : Stummi ar vugale evit ober gante diwealc'h tud eon, kristenien vad ha labourerien kalonek.

Siouz ! hon mestrou-skol giz gwechall a zo breman tano... Unanig beunak, koulskoude, a ve kavet c'hoaz, mes n'hallont laret gir, pe anez ez int diskuilhet dustu gant ar re-all, a dremen an darnvuian eus o amzer d'ober brezel d'ar beleg ha d'ober politik.

Ar mestr-skol na dle ket ober politik : honnez

PEDER C'HRAS !...

(Pennad diwezad).

An aotro Krogmad ne c'houlennas ket hirroc'h. Mont a eure raktal d'ar gear da gonta an dra d'e hini.

Laouenedigez vras a oe en ti o klevet eur seurt kelou :

— Penôs ho peus en em danned? eme an itron.

— Me 'm eus roet da gredi d'ar morjin koz em oa eun bagad bugale ha padal n'em eus nemet unan, eur penher karet.

— Mat ho peus great! mat ho peus great! eme an itron, ha ne c'helle mui dic'hoarzin gant an dudi da c'hellout prestik « ober mez adarre, emezi, d'ar sakre laouek daonet-ze » (evelse eo hanve Jakez!)

Setu i o daou d'ar c'hraon. Krogmad a grogas mat en unan eus e leueou bihan, hag a-barz pell, gant zikour eur gontel, e reas d'ezan renta e huanad diweza.

— Gwelomp breman, emezan, ha gwit eo komzour ar pôtr-koz! Pe seurt gras a c'houlennomp da genta?

— Hor mab az? a zo eur paotrig koant, mes koantoc'h e vije c'hoaz evelkent ma en dije eun tam baro war e vizach. Goulenn 'ta, mar kerez, ma en do baro hor mab!...

Evelse e oa greet ha troad al leue bihan a gouezas. An daou bried a deuas gant prez d'an ti. Petra weljont? O mab o sellet en eur melle-zour, evit gwelet petra an diaoul a oa dent war e vizach en eun taol kont. Mar doa koant ar mabig araok, breman n'oa mui. Ar vam a c'houlenne ma en dije baro; bet he doa he goulenn. Ne veze gwelet dream ebet mui d'ezan; goloet oa holl e vizach a varo du-pod. E fri, e dal, e ziskouarn, e zaoulagad, leac'h ebet na veze gwelet, ken teo oa ar baro dre-holl hag hirroc'h 'vit e vleo. N'eus forz pion a ve bet eno a vije dirollet da c'hoarzin o welet penn ar mab henvel-mil breman ouz penn eur marmouz, « marmouz an itron » gwisket gant dihhad brodet. An aotrou hag an itron Krogmad na c'hoarzent ket, pell ac'hano!

Dizrei 'rejoint d'ar c'hraon bep a zac'had kounar enno :

— Petra c'houlennomp breman? eme Krogmad.

— Petra? petra? Goulenn, diana, da genta ma vezo lammet e varo digant hor mab; marteze ne vo ket goude ken heuzus da welet!...

Eur wech troc'het e droad d'al leue, gwaz ha maouez a zizroas adarre d'an ti. Gwelet a rejont o mab evel diagent pa n'en doa ket a varo; braoet oa eun tam mat. Breman, da vihana, ez oa eun tam dishenveldigez etrezan hag ar marmouzien.

Dizro d'ar c'hraon an aotro Krogmad a c'houlennas evit an deirved gwech pe seurt gras a oa da c'houlenn. An itron, fulor enni atao diwar goust an dro farsus c'hoarier d'ez, a respontas dic'hek : « Da fri em godell! » N'oa ket peuraebet mat he ger gant an itron ma oa fri Krogmad e godell e vaouez :

— Tec'h diouzin! tec'h diouzin 'ta! emezi... kea kwit pell diouzin!...

— N'hellan ket kaout va fri diouz da c'hodel! eme an aotrou kez, paourkez aotrou!

Aman adarre e oa kement a leac'h da c'hoarzin, ha ma oa kentoc'h dirak penn marmouz ar mab, o welet an itron fuloret o taoulammat dre ar c'hraou... hag an aotrou, paourkez aotrou, o vont warlerc'h a bouez e... fri.

— Peseurt gras a c'houlennin breman? eme an aotrou.

— Peseurt gras? ar c'hras da denna da fri diouz va godell!...

Ha setu fri an aotrou deuet e frankiz adarre goude beza bet epad eur pennañg prizonier e godell an hini goz.

Azalek an devez-se an aotrou hag an itron Krogmad n'int ket bet eet da c'houlenn ouz Jakez penaos ha perak eo deut e binvidigez d'ezan. Gwelloc'h e kavont chom sioul bras en o zi da glask ar wirionez kuzet er geriou-man :

« Evesait ouzoc'h hoc'h-unan, ha lezit ar re-all e peoc'h.

Marvailher Kerneleon.

Hepdale : Moustreirig gant an hevelep hini.

MIZ GOUERE

Da c'houlenn Maria Garmez,
Gwelloc'h gavr evit bioc'h lez.

Pa vez glao da ouel Madalen,
E vrein ar c'hraon hag ar c'hesten.

Da viz gouero,
A lakeer falz war an èro.
Da gann gouero,
Eost e pep bro.

Da gann gouere gant e wastell wenn,
Ma ne vez hao an eost, 'vo panen.

Da zantez Anna,
Neb a ya,
Anna,
Morse n'e ankoa.

MIZ EOST

Heiz dibel ha gwinitz pellek,
A laka an arc'h da veza barrek.

Da hanter eost, glao pa vez;
Kollet ve ar c'hraon kelvez.

Da zantez Helen nep a ya,
Koll e boan morse ne ra.

KOVESION AR C'HLASKER KOZ

*Madou 'r re-all ne c'hoanta ket,
Evit o c'haout hep gwer ebet.*

I

Er bloaz 1675, e weled bemdez eur paour koz e kichen dor vrasa unan eus hor c'haera ilizou-meur. Gwisket e oa a druilhou, e vleo restlet a ziskenne a vouchadou tro-war-dro d'e henn, hag a guze eul loden eus e dal roufennet; e varo bir, deut da veza gwelet gant an amzer, a c'holoe eul loden vras eus e aspre.

Ouspenn bloaz a yoa abaoe ma teue bemdez evel-se da doull d'ar iliz da vare an ofisou. Meurbet iskiz oa e zoareou : chom a rea pelloc'hik eget ar beorien-all, ha ne c'houlenne an aluzen digant den ebet. Ha pa zigoueze gant eun den karantezus bennak rei d'ezan eun aluzen, ar paour a drugareka o stoui e benn hep lavaret ger.

Morse ne lakea e dreid en iliz. Er gwasas der-veziou kriz ar goanv kouls hag er re gwrezusa eus an hanv e kaved anezan en hevelep leac'h. Hag o welet e lagad difinv, e c'henou a-dreuz, faeus hag ankeniet, meur a hini a grede edo eno o paea evit eun torfed bennak.

Glao a rea er mintinvez-se eus a viz meurs, gwasoc'h evit pa vijed en uhel o teuler dour war an douar a varazon. Eur beleg a deuas da dreman, hag e chomas kreun a-zav dirak ar paour kez klasker, a grene gant ar riou dindan e druilhou distrempet.

Kalon ar beleg a vennas ranna gant an druez.
— Va mignon, emezan d'ar paour, perak e chomit-hu aze evel-se dindan an dour-beuz-se? It en iliz, pe deut ganen-me d'ar presbital.

Ar paour a skrijas o klevet komzou ker madeleuz; sevel a reas e zaoulagad war an hini a gomze outan, hag e c'hrosmolaz etre e zent : « O! ar vouez-se!... he anaout a ran! Na pebeuz soujou kasais a zigas em sparet! » Ar c'homzou-ze en doa lavaret evel evitan e-unan. Goude e lavaras a vouez uhel :

— Piu en deus komzet ouzin?
— Me, eme ar beleg; pe seurt vad a c'hellfen-me da ober evidoc'h?

— Ober vad d'in-me! eme an den koz outan e-unan; ober vad d'in-me?

Goude eur pennad e lavaras gant eur vouez nerzusoc'h :

— Den ebet hiviziken na c'hell er bed-ma ober vad d'in-me!... Me a zo en den milliget! eun den daonet!...

Hag e koezas adarre er stad m'edo diarok : e zell difinv, e benn plezet, e vuzellou prenet kloz. Ar beleg a fellas d'ezan gouzout hirroc'h.

— Arabat eo d'eoc'h koll fizians, va mignon, a lavare-hen. N'eus nemet an disesper a gement na c'hellfe ket beza pardonet. N'ankounn'halet ket hoc'h eus hiviziken eur mignon, ha mar ho pefe ezom eus eun dra bennak, deut d'am c'haout hep aon ebet.

Ar paour a zeblante beza bouzar ha mat.
Ar beleg a gemeras en e yalc'h eur pezh arc'hant gwenn hag en lezas da goueza e tok ar paour. Ne jomas ket goude da c'headal eur hennoz-Doue!

O klevet an arc'hant o steki ouz an arc'hant, ar paour a zavas e henn, hag a gemeras ar pezh gweun-ze, o lavaret :

— An dra-ze avat n'ez aio ket evel-se. N'hellan e doare ebet digemeret eun aluzen digant hennez... Ya, hen eo, sur-oun brema. Anavezet mat em eus anezan dioc'h e vouez, dioc'h e vale, ha zoken dioc'h e zremm. Hen eo! ya, ya, n'em eus dougtans ebet!

Ar beleg koulskoude a yoa eat ac'hano. Ar paour a dostaas ouz eun dall, hag e lezas da goueza en e grogen ar pezh arc'hant nevez-roet d'ezan e-unan.

Goude-ze e pellaas ive d'e dro, dastumet gwella ma c'helle en e druilhou.

Ne deuas ket, antronoz, d'e leac'h kustum. Hag ar beleg da lavaret pa dremanas dre eno : « Ho pezet truez, va Doue! ouz eur pe'her paour! »

Ar beleg-se oa an Aotrou chaloni Jakez.

II

Daoulinet dirak kroaz e gambr, an Aotrou chaloni Jakez, a zo e spered gant e vloaveziou kenta, evel kuzet gant eur ouel du, ar pezh a rea n'o gwele ket sklear a-walc'h. E yaouankiz a yoa, evel pa lavarfen, eur mister evitan. Tra souezus! ar gwel eus ar paour truilhek-se ha na felle ket d'ezan kaout skouzel ebet digantan, en deus divorflet ha lakeat da virvi eur bera traon hag a yoa evel morgouset e tenvalijen e spered. Atao oa bet lavaret d'ezan n'oa ken nemet eur paour kez bougl bet dastumet war an hent. Penaos eta e teu souj d'ezan brema eus eur maner kaer? Gwelet a ra zoken ar maner-ze en e spered : tro-war-dro ez eus tachadennou divent a c'hlavrez; ama hag a-hont gwaziou trouzus o tiriilh eus an uhel hag o koueza e beoliou great gant mein-marbr eus ar c'haera. Bokedou a bep tu, gwez bras boedennek e leac'h ma kuz al lapoused o neizi. Eur bugel a zo dre eno o kemeret e blijadur e pep frankiz. Ar bugel-ze a zo karet ha great brao d'ezan. Bemnoz e teu eur vaouez d'e ger'chat ha d'e gas d'eur gwele mat, o pokat d'ezan kant ha kant gwec'hall. Ar vaouez-se a c'halv anezan : « Va mab! »

Hag an Aotrou Jakez a gred eo hen ar bugel koant-se, eo hounnez e vamm, ar vaouez-se ken madeleuz ha ken dous! O! petra na rofe ket evit gouzout he hano!... evit kaout c'hoaz eur pok digant e vamm! Ha mar deo re ziwezet evit gellout pokat d'e vamm, petra na rofe ket evit gellout da vihana daoulina war he bez!

Ar beleg-ma a zo eun den a galon; setu perak e lavar araok sevel en e zav :

— Aotrou Doue, ho pezet truez ouz ar re o deus laeret digant eurusded va amzer da zont! Roit d'ezo ar peoc'h hag ar vuez a bado da viken! Dirdign! Dirdign! Dirdign!

Kloc'hig ar presbital eo a yoa e bole.

— Petra 'zo a-nevez? eme ar beleg.

— Eun den klanv, toc'hor bras, a c'houlenn koevez ouzoc'h araok tremen.

— Mat eo, mont a ran dioc'h-tu ganeoc'h!

Digouezet dirak ar c'hoz toull tu, an diavezed a lezas ar beleg da vont en e raok.

— It tre, Aotrou, emezan, it; aze eo ema ar paour a c'houlenn ac'hano; me a zo o chom du-ze, pelloc'hig. Dre druez eo ez oun eat d'ho ker'chat.

An nebedig komzou-ze a ra d'ar beleg ober eur skrijaden.

Piu eo ar paour-ze? O! doneti ra eo an hini en doa kavet e kichen dor an iliz. Ha perak e c'houlenn gwelet ar beleg hizio pa na felle ket d'ezan e zelao deac'h? Piu oar? Ha piou a zo bet eat morse betek gouzout sekrejou an Aotrou Doue?...

Hag o veza savet d'an neac'h gant an deleziou a gase d'ar zolier ar beleg a roas eun taol glin d'an nor.

AN EMZIVADEZ VIHAN

Emzivadez da hemzek vloaz,
Hep skoazel, hep ti na noaz :
N'em eus aberec va c'herent kez,
Nemet furnez ha dienez !

Lezet 'kreiz ar brasa mizer,
Abaoue pell ha pell amzer :
En eul lochenennig e choman,
Galvet oan ar baourez vihan.

Ah ! ma karfen hirio selaou
Kement a ginnig d'in madou :
Hep mar, eas ve d'in pignat
D'eur renk uhel, d'an esa stad ;

Mes disprijout a ran danvez,
N'ema ket d'e heul ar furnez :
Eun tenzor eo ke c'halon glan
'Vit an emzivadez vihan.

J. C.

GWAD AR VRETONED

Diriou 'zo bet c'hoarvezet eur gwall dol war al lestr la *Couronne* en Toulon. Eun toullad martoloded hag ofiserien e oant o tennan gant eur c'hannol, pa strakas heman ha lazant c'houec'h ha tizout naontek eus an dud a oa wardro.

Entonez ar re lazet e oa *pemp* Breton ; etonez ar se dizet, al loden vras a zo ive Bretoned. Ouspenn ar vartoloded oe lazet war an tol, tri-all a zo maro aboue ; unan ane oa Breton. Setu aman an hanoioù :

Vichou, eus Plogoff ; Coataniec, eus Louargat ; Robert, eus Plougoumen ; Bénigne, eus Piriac ; Maux, eus Rospez ; Grave, eus an Oriant, holl lazet.

Ar gwall-chans a zo war ar vartoloded, ha dre m'eo al loden vrasan eus ar vartoloded Bretoned, eo warne e koue ar pep gwasan.

Gwall ger e koustfe da Vro-C'hall ma renkfe pae-an holl wad a skuilh ar Vretoned eviti !...

Gwirioneziou

Kaer eo karout ar wirionez hag al lealded, mes kaeroc'h eo labourat, stourm ha gouzanv evito.

An den en em gav peurvuia gwelloc'h eget ne deo, hag en em briz muioc'h eget ne dal.

Béva a zo kerzet etrezek ar maro ; mervel a zo mont e-barz ar beurbadelez (éternité).

Fentigellou

— « Sell ! te a teus eur montr. Me laka eo kous-tet ker d'it ? » — « Oh ! ya, eur miz prizon ! »

— « Penós c'houi 'zo hanvet Pipi Robichon ? Penós e skrivit-hu an dra-ze ? » — « Godiser, gant eur bluen, m'bar vad ! »

An hini a zeu da vazata e wreg a zo henvel ouz an hini a vazat eur zac'had bleud : ar pez a zo a vad a ya kwit hag ar fall a chom.

— « Daoust ha gwir eo ez eus disken Justis ez ti en deiziou-ma ? »

— « O ! disken-Justis ! petra a leveres ! Me zo o chom er pevare estach ! »

— « Perig, te zo re yaouank evit butuna. » — « Gwir eo, mes o teski emoun evit pa vezin en oad. »

— « Loeiz, asanti a rafes servichout d'in da dest ? » — « Daouet ! ha te a ve o vont d'en em ganna e duel ? » — « Gwelloc'h eget-se eo, mignon ; afer a zo em afer eus ar rest eus va buez : o vont da zimezi emañ. »

— « Sell-ta, filhor, te a zo aet a-biou d'az medisip ha n'e teus ket e zaludet ! » — « N'em eus ket great mat, a dra zur, mes keit-so abaoue m'ou pare glok ! »

AR C'HREUNEN WINIZ

C'houi guz, o greunen vihan, dindan e blusken [aour,

Danve ar bara a vag ar pivoividig, ar paour ;
C'houi ken dister da welet 'man dindanoc'h kuzet
Magadurez an den hag e evurusted.

Ho pleud chenchet en bara dalc'h an den en bue,
Ha dre 'r Burzud ar c'haeran... a vag c'hoaz an [ine ;

Rak dindan ar bara 'vit chom ganimp aman
Eo en em guz Jezuz, 'vit donet d'hon magan.

Den na vezo biken, daoust d'an holl ijinou,
Gouest da ober enn dra da baran ar c'hreunen,
He gwelet a raimp bemde ha c'hoaz den n'hall [kompre

'Barz ar c'hreunenig vihan a zav 'n hon douarou.
Nan, rak Doue laras d'hon tad kentan gwechall,
Penós e renkchemp bevan dimeus c'houezen hon [tal.

Eul Lenner.

DA C'HOARZIN

Fanchig Lukas eus a Gerien
E ru e vleo gant eur ruben,
An eus triwac'h skoed en gobr est,
Hag eun hanter poezelad hei,
Daou skoed hanter a vonei,
Steuen eun tog, danve eur botou,
Hag eur berr-gamachou,
Eur jiletan war lassou,
Ha c'hoaz e lare d'e vom,
Na c'houle ket chom.

PARIZ

Paour kez plac'h !

Jeanne Bourdon, plac'hig pemzek vla eus Douarnenez, devoa gret 'vel kalz a re-all, a oa et da Bariz. Kavet a reas plas en eur arruout ar 15 a viz gouere ; mes dek devez goude, he mestrou a gwitaas Pariz o lezel anei war o lerc'h.

Ar plac'h, pa n'he devoe gwenneg ebet ken, na peadra da c'hounit, a renkas mont da c'houlen repu gant ar polis. Serret e oe, kaset dirak al lezvarn, ha barnet da chom betek eur bla warnu-gent en eun ti a binijen.

Ma karje bean chomet en Douarnenez !

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

KONK-KERNE. — Eud divinourez. — Skriva reer eus ar gear-ma, penaos eur Vohemianez o veza diskennet e ti an dimezel P., o terc'hel hostaliri, ke Penesof, a oe roet digemer vat d'ez. Goude eur pennadig kaoz, an estranjourez a dro ar gaoz war an dimezi. En he galloud e oa, emezi, rei da anaout pe seurt fortun a raje an dimezel yaouank, dre ma helle anaout war ar poent-ma ar pez a oa da erruout gant pep-hini en amzer da zont. Evel ma selaouez mat an dimezel, e lavar d'ez diskouez d'ez he dorn deou. Lenn a ree e pal an dorn kalz traou hag a helle arruout ganti, mes evit gouzout d'ar zur e oa red d'ez kaout eur mouchoar-fri, eur vi hag eur yalc'h leun mad a aour pe a arc'hant. Ar pez a oe roet d'ez war an eur. Neuze ar Vohemianez a ra forz jestrou hag ardou, hag o veza torret ar vi dindan seul he botez, hel laka eur mouchoar gant ar yalc'h arc'hant. Gant eur vonez hirvoudus ha krenv e teu da lavaret : « Ar vi-ze, dimezel, a zo ennan kuchennou bleo eus penn daou hag a zo maro en ti-man. » An dimezel yaouank, strafuilhet holl gant ar c'homzou-ze, en em denn en eur gamb e-kichen, o lezel an divinourez he-unan.

Eur pennad mat goude, pa oe tremenet he strafuilh, e teuas war he c'hiz hag e kavas war al leac'h ar mouchoar hag ar vi torret ; mes an divinourez gant ar yalc'h ha 600 lur a yoa aet da redek bro.

LESNEVEN. — Eur c'hi klanv. — Eur mab d'an otrou Crannelec hag a zo o terc'hel hostaliri e Brest, o veza deut war ar pourmen da Lesneven, a oe taget en deiz all gant eur c'hi, ha lakeat en eur stad truzus bras. Ar c'hi, o veza bet kaset d'ar medesin-loened, a zo bet kavet klanv.

PLOUZEVEDE. — Pardon Itron-Maria-Berven. — Disadorn, 15 a viz east, en em gave pardon bras Itron-Varia-Berven, en Plouzevede. Ar pareziou tro-war-dro a zo deut di gant o banielou, o c'hroasiou kaera. Muzik an *Dre* ken brudet er vro a roe da glevet e gaera melodi.

PERROS. — Pardon an Itron-Varia-Sklerder. — Biskoaz n'em oa gwelet kaeroc'h pardon evit hennez, na zoken kement a dud eunan. Bean oa enno entro 15 000 a dud diredet a bep sort broiou, tud a Vreiz deut da bedi an Itron-Varia-Sklerder hag ivez tud-all eus ar broiou krec'h, tud eus koste Paris hag eus ar broiou all deut da dremen eun nebeut deiou war ribl ar mor, a oa deut ive d'ar pardon diwar dudi, da welet Breiziz pegen kalonek int ha penos e pedont ar Werc'hez, mat Doue.

Warben dek eur kouls an oferen bred ar chapel a oa leun-kouch a dud a oa o pedi dirak skeuden an Itron-Varia, ar loden vrasan ane Bretoned. An divroidi a deus hag a ye eus an eil tu d'ar chapel d'egile hep daoulinan kals ane da zaludi ar Werc'hez. Koulskoude pa zonas dek eur e oe fin d'ar c'hoari-ze. Neuze e pignas an Tad Eveno ouz an Oter. Gret en eus eur brezege gac hag a zo aet don en kalonou ar bobl stouet eno o pedi dirak skeuden ar Werc'hez.

'Ben fin an oferen ar bobl a gendalc'he da greski. A-ben ar gousperou ne cad ken evit kerzet, gant an engroez ; e lec'h kerzet e vijed douget gant an dud o tont hag o vont.

Da der eur e oe kanet ar gousperou, ha goude e oe gret eur prosesion eus ar re gearan. Eno e weled aocherien Ploumanac'h o tougen listri bihan, bugale Ploumanac'h hag ar Sklerder o tougen o banielou. Ar Werc'hez a oa douget gant merc'hed gwisket en gwen ha santez Anna gant groage.

Daoust ma oa kals a dud ez eus bet koulskoude nebeut a drouz, rak pep-hini e oa e galon hag e spered gant e bedennou.

Da fin ar prosesion, warlerc'h eur pennad mat, ez eus bet daou pe dri ganfart o c'houtellat, mes re diweat e oant ha re nebeut a oa ane, rag ka-naouennou ar bobl a drec'he warn e : ar Vretoned a gase o faden kalonek warzu ar Werc'hez vin-niget hag a lare d'ei, a-gevred gant o beleien vat :

Gwerc'hez, ni a zo ho pugale,
Hag ho kar evel hon zud koz ;
Hon diwallet holl, korf hag ene,
Mac'h efomp oll d'ar baradoz.

Goude ar prosesion e oe gret zalud ar zakramant (meulet ra vezo) ! ha goude an Tad Eveno an eus lavaret ar gir bennak d'ar bobl. Ar pez am eus gallet da entent e oa lavaret d'ar Vretoned chom bepred Bretoned, non pas kad aon na mez da vean Bretoned, rag ar Vretoned eo ar gwellan tud a zoujanv Doue, tud ha na spontont ket rak o skeud.

« Bevet eta, emean, evel ho tud koz, ha ne lezet biken ho trec'hi nemet gant ar maro ! »

Goude e oa avelet ar vugale vihan.

Betek noz e oa tud dirak skeuden ar Werc'hez ha ne oar den nag a brof ha nag a beden a zo roet ha gret en devez-se d'an Itron-Varia ar Sklerder. Doue hag an Itron-Varia ra baeo ar bele-rined !

Eur bugel d'ar Werc'hez.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

n'eo ket e vicher. Ne dle ket 'n em staga onz heman, na hennez; ar mestr-skol a dle 'n em staga ouz e garg hepken ha c'hoaz e kavre d'ober, ma ra e vicher evel m'eo dleet.

Ar mestr-skol gwechall n'avee ket ar politik; tremen a re e vuez oc'h ober skol.

Pa deue ar maro d'hen diskar, ar barouz a-bez hen heuilhe d'ar vered, hag en eur deurel eun tam douar pe eur strinkaden dour binniget war e arched, pep-hini a lare: — Hennez oa eun den mad!

AR YEODET.

P. S. — Ar zun a deü e komzfomp eus ar mestr-skol a vremen.

AR PARDON EUS AR PEC'HEJOU

Genel a reer e stad a bec'hed, ha goude ma 'z eer deut da gaout skiant, buhan a-walc'h an den a ra gwall implij eus ar frankiz e: deus lezet Doue gantan en eur zont da vankout d'e zeveuriou: ar vuez a zo eur stourmad pemdeziek eneb an drouk-spered, ar gwall-skoueriou, ar gwall-youlou. Plijet eo gant Peurvadenez Doue sevel eur zakramant evit lemel diouz ene peb-unan ar pec'hed a ouen, pe orijinel, ober ac'hanomp kristenien, bugale da Zoue ha d'an Iliz, ar zakramant-ma o veza ken red evit mont d'ar Baradoz, ma les Doue gant an holl ar galloud d'he roi. Ar gwasa 'zo e resev ar zakramant-ma nemet eur weach hag eur pec'hed marvel graet a zo a-walc'h evit daoni an den evit ato.

Jezuz-Krist en e drugarez en deus kinniget d'an den pec'her eun eil planken a zavete, *secunda post mansuetudinem tabula*, en eur rei da hiniennou ar galloud da bardoni ar pec'hejou en e hano. Ar galloud burzudus-se en deus roet da genta d'e Ebestel hag e kendalc'h d'e rei hirio c'hoaz d'an Tad Santel ar Pab, d'an Eskibien, d'ar veleien a c'hoc'h e blas war an douar, en Iliz en deus savet.

Sant Per hag an Ebestel all, ma teufent hirio war an douar, a gavfe an Iliz zantel, katolik evel en o amzer, gant ar memez kreden, ar memez renadur. Histor an Iliz n'eus nemet eur vouez evit lavaret eo deut ar galloud da bardoni ar pec'hejou d'ar veleien dre an Tad Santel ar Pab a-dreuz ar c'hantvejou a-berz an Ebestel o doa e resevet digant Jezuz, evito o-unan hag evit rei da re-all en e hano.

An Iliz zantel, katolik, hag hi hepken he deus gallet kenderc'hel da gaout ar galloud-se dre sakramant an Urz roet da hiniennou eus he bugale hed ar weach. N'heller ket lavaret eus ar Brotestanted ar memez tra. Ha perak? Setu ama: Lakeomp e ve denet abaoe Luther, tad koz ar Brotestanted, eur beleg katolik d'en em ober protestant, heretik; beleg e chomo betek ar maro, mes e c'halloud n'heller ket rei da eun all. Lakeomp e ve denet eun Eskob da veza protestant: eun Eskob a hell rei sakramant an Urz, ober beleien nevez, mes n'heller ket ober Eskibien eus ar veleien en devo great. Perak? Dre ma rank eur beleg evit sevel d'ar garg a Eskob beza aotreet, sakret Eskob gant an Tad Santel ar Pab, hag ar Pab eus e du, abarz rei da eur beleg ar garg a Eskob, a ra d'ezan diskleria dirazan ar greden en deus ha prometti e vezo sentus ouz holl gemmenadureziou Tad an holl kristenien. En hevelep doare, ar vinstred pe pastored ar Brotestanted n'o deus ket ar galloud da rei ar pardon eus ar pec'hejou, memez en eur ar maro.

Klaskit ha gwelit, leannenien, ha kaout a heller war an douar unan da veza lakeet skoaz-ha-skoaz gant ar beleg. Dreizan, war e c'her, Doue a bardon d'ar brasa pec'her en deus keuz ha glac'har d'e bec'hejou, Doue a ro d'an dud an aluzen eus e drugarez hep muzul; ar pec'hed a zeu da veza diverket war gajer ar barner d'emp holl, dor an ifern a zeu da zerri ha dor ar Baradoz a zeu da veza digor evit resev ar pec'her en deus bet ar pardon dre an Absolven.

KATOLI.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deut da vale en Breiz

d'he c'hamaradez en Pariz

(KENDALC'H)

Kerrosion, 14 a viz Eost 1908.

Lusi gez.

Na 'm eus biskoaz 'n em gavet evrus evel aboue ma oun aman, en Kerrosiou. Aman ne ve komzet eus ma c'henitervez Matild nemet evit ober gwap anei. Aman n'eus ket a ardou gant an dud.

Na ma yeontr, na ma moereb, na ma c'hendirvi ha kenitervez n'o deus iaket brasoc'h pod war an tã 'vit kelo kaout eur Barizianez en o zi. Ma yeontr an eus bet desket d'e vugale e talvee al labourer eun den all, hag e skeud ze, aman, da vihanan, ne welan den ebet kas tec'hel diouz e renk. Kentan gir a lavariz diwarben Matild, an nosvez kentan a dremenis aman, a lakas kaiz a c'hoarz ha fent.

— Bopred e lak manegou da vont da c'horor ar zaoud? eme ma c'henderv Roll.

— Goro ar zaoud? eme Godig, an hini heman eus ma c'henitervezed. Hag-en n'e bet biskoaz he fri betek toull dor ar c'hraou? Pa zant c'houez an teilh tom e koue klanv.

— Tri bla so n'e ket bet o welet ac'hanomp, eme ar vam; mes mat a ra chom er gêr, rak aman n'e ket eur gouent bennak a zo!

— O! marfad, ne chomo ket en kouent 'pad he bue. 'Vit an deioù e klevfomp laret e vo dimeet, eme Guilh vras, ar mab heman.

— Gant piou? Gant piou? Gant piou? eme ma zer c'henitervez war an dro.

— A fe, n'ouzon ket, avad! Gant eur bourc'hiz bennak, oun walc'h, rak ar seurt ganimp n'int ket mat eviti.

— Perak? eme Fanchig, ar mab yaouankan, n'eo va laret seurt ebet c'hoaz.

— N'e ket gwenn a-walc'h da zaouarn, na flour a-walc'h da c'heno, eme Roll.

Fanchig na respontas ket. Ma c'henderv Fanchig a zo eur pôtr triwech'ha, eur moanard wesk, daoulagad c'hlas d'ean ha bleo melen, koant evel eur plac'h, ha kanfard pez a hall bean.

Ar gaos a droas diwar Matild, moereb koz o vean goullet ganin kontan d'ei doareou Pariz.

A! Lusi, te vije bet souezet, mar vijes bet aman, o klevet eur plac'h koz eus Breiz-Izel o laret he zont diwarben ar gêr-veur. Klevet am eus bet koazel eus Pariz hag eus an treo gaer a zo enni, dirak tud hag a gred d'e bean tud a spered; mes pebez kemmetreze ha ma moereb koz! Komzet da dud a zo eus ar « metro », eus an « telefon », eus an « elektrisite » impliet er c'heriou bras en ken lies a stumm, hag e tigorfont o geno hag o daoulagad 'n eur lavaret: « Nag a spered a zo breman emesk an dud! En Pariz-se 'zo kanfarded hag a oar an dilu eus pep tra! » Ze zo bet laret d'in dija meur a wech; mes ma moereb koz na re van ebet eus an treo-ze.

— Ba! ba! emei, n'eus ket ezom da vean souezet; pep den a dle bean akwit war e vicher hag ar skiant a gresk, a re da re, dre forz bernian.

Mes laret d'in, ma nizez, hag-en 'zo bue vat gant an dud du-ze en Pariz, hag-en ec'h ouzont doujan an eil d'egile, 'n em garet ha bevan en peuc'h? Ar merc'hed, goût ouzont derc'hel o ziegez, lakat daou benn ar bla da dapout, ha, waz 'vit se, espern eur gwenneg bennak?...

— Fe, moereb, emeon, hep seurt a zo!

— 'Vel el lec'h-all! n'e ket gwir? emei. C'hanta neuze, Pariz n'eman tamm bet dreist d'ar re-all.

O komz evelse, moereb koz na oa ket kas rei d'in eur gentel; mes ar wirione a lare, herve he zont. 'Vidon-me a gavas he c'homzou leun a boell. Aboue eo koac'het Pariz eun tam brao 'n em spered, hag eo eur wræg koz diwar ar meaz, ha n'eo bet biskoaz pelloc'h 'vit Lannou pe Wengamp, eo a lakas ar wirione da baran dirak ma daoulagad...

20 Eost 1908.

Renket am oa troc'han ma lizer, an de-all, evit

mont da zikour zerri kerc'h; mes hirio n'eus ket kement a brez warnon da vont da zerri kerc'h; da skrivan d'it, avat, ne laran ket, rak mall eo ganin kontan d'it an neventiou 'zo c'hoarvezet aboue digwener.

Ar wech-man eo et an tã gant Matild; ne gomzer ken nemet diouti. Goude bean bet war ar poent da zimezi, setu torret an afer, ha bet gant Matild eun distagaden seurt m'eo dies gwelet. Keun am eus abalamour d'he zad ha d'he breur, rak en Lannou hag aman, n'eus ken kaoz nemet diwar he fenn.

Aboue ma oa dizro d'ar gêr eus ar skol, eur pôtr yaouank eus Lannou a gase d'ei lizerou sinet Amédée de Kersko. Matild a oa lorc'h enni gant he lizerou. Biskoaz, avat, n'he devoa gwelet hec'h amouros, pa skrivas d'ei adarre eul lizer o laret en em gavje da Ouel Mari Hanter-Est e pardon an Itron-Varia an Ele, en eur chapel tost da Gerrosiou.

Me oa et ive d'ar gousperou gant ma c'henitervez Gwenn ha Fanchig, he breur. Ne ouieomp seurt ebet en eur-ze; setu ni o vont 'vit saludi Matild hag he c'hoar goude ar gousperou, Matild gwisket en he c'haeran, gant eur roben c'hlas moug, eur gorfen ru hag eun tog plouz ken ledan hag eur parapluï ha warnan eur bluea wenn ken hurr ha lost eur veuc'h. Sonezet bras e oomp, o welet eur pôtr yaouank en kaoz ganti...

N'halla ket, ma flac'h kez, kontan hirroc'h d'it hirio, rak e-berr e ver o tornan, hag eman lod eus ar gegin war ma c'hont.

Ar pep gwella eus an istor a viran d'it benn ar wech-all.

Gant karante e pokan d'it start.

Da gamaradez Tereza.

EVURUSED A GAVER EN TREDE-URZ

O va Jezuz, gwir bried an eneoù,
Daoulinet oun e-harz hoc'h aoterioù;
C'hoant bras am eus da unani va buez,
Evel diskibl, gant hon Tad sant Fransez.

DISKAN

O ya, va Jezuz,
Me zo eürus!
Hiviziken poan ebet
Na gavin re galet!

« Tosta, va mab, a lavar va Mestr karet;
« Plijout ra d'in atao digemet
« Kement hini a leunian a garantez,
« Hag a henchau warzu *Urs* sant Fransez.

« An den nevez a rank kaout dilhajoù kaer,
« Va mab, va merc'h, kemer ar zae vezer:
« Divezatoc'h, em baradoz, te welo,
« Dirak ar zent, pegement e skedo.

« Ha c'hoant ac'h eus, eme ar pried divin,
« D'en em staga evit atao ouzin?
« Lak ez kerchen ar *gordonennig* skoulmet,
« Skenden zister eur garantez touet! »

— « Mall eo ganen ho kaout, sant Fransez,
[da dad,

« Me, ho pugel! ... D'in-me pebeuz eurvad!
« Me ho kemer, elez santel, da destour;
« Am zikourit da veuli va Aotrou!

« Setu m'eo great ar *bromesa* da viken!
« Da Jezuz oun, d'Ezan, d'Ezan hepken;
« D'Ezan vezo va c'halon, va c'harantez,
« Evitan eo e labourin bemdez. »

O kroazig ker, kroazig va *profesion*,
Deus, deus buan, da jom war va c'halon!
Hiviziken, daoust d'ardou an droug-spered,
Te rei nerz d'in da veza treac'h bepred.

Lezen va Zad, *reolennig* Urz sant Fransez,
Me az kemer hizio gant levneuz;
Az heulia pis a vezo va holl freder,
Kas ac'hanon, en dizro, d'am zad ker!

PLUENZIR.

Le Gérant: F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCIOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

RENEROEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑOOU-KONVERZ

An Aotrou TONNELLES, 27, ball Charner, a zigemer asz !

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GRIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.
FURNEZ AN GRIZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo : ma ve trec'het,
Ouspen ar Vez, e ve Pec'het!
MILIK.

ALI

En sonj omp, adalek breman, d'ober, pa hallfomp, *Loden ar Vugale a-ziavez eus Kroaz ar Vretoned.*

Da c'hortoz, ar vugale a zalc'ho da skrivan bep sun war o c'haierou eun tregont linen bennak, kemeret diwar *Groaz ar Vretoned.*

Al labouriou skrivet a zervijo 'vit ar prijou bep bla.

GOUELIOU BREURIEZ AR BREZONEG en miz Gwengolo

An 8, en *Plouédrin*; ar zul diwean eus ar miz en *Peurit*.

Hastet gopra « Pipi Gonto » !

Nao gwenneg warnugent an tol :

Petra lar eul *Leonardez* diwarben « Pipi Gonto »

Eul *Leonardez* a skriv da *Dir-Na-Dor*, diwarben *Pipi Gonto* :

« Setu me o paouez achi leun ho *Pipi Gonto* eilved ; ha zur on n'on ket me unan eus ar c'hant kentan a ro d'eoc'h e veuleudi.

Ho prezoneg a zo eus ar freasa, ha n'eus *Leonard* ebet a gement n'her c'homprenfe ket.

Ouspen, ho istoriou brao kenan da lenn, a zo ive leun a gelennadurez hag a skouer vat.

Nec'het a-walac'h e vichen ma vije red d'in lavaret pehini anezo a gavan ar braoa ; koulskoude, daoust hag-en n'ho peus ket kavet unan bennak da lavaret d'eoc'h ez a al lore gant *Kovizion eur pôtr yaouank ?* »

En eur drugarekât ar skrivagnerezh, e kinnigomp kement-man d'ar re n'o deus ket c'hoaz prenet *Pipi Gonto*. Benn ar goanv ne vo ken nemeur. Hastet !

O TIZREI DIWAR AN OFEREN

Disul en em gaven en oferen seiz eur en eur gêr vreton eus Bro-Dreger. Gonde an oferen, pa oan o tisken pazenned an iliz, eur vouez war ar ru o kanan a reas d'in zevl ma skouarn. Tou *Ker Is* a gleven, mes n'intenten ket ar c'homzou. Tostât a tis ha 'n em veskan gant an dud a oa o sellet hag o chilaou ar ganerien. Dindan eun tam-mig telten ru, eur pôtr hag eur plac'h, krammen ar baourante war o fas, a jache warni pep-hini eus e du, hag o-daou e tisrevelent e gallez, war eun ton brezoneg, istor eun torfed bennak c'hoarvezet neve-so en Oriant. Komzou oa 'barz ar zôn eus « des sacripans » ha « des tyrans ».

N'hallis ket harz, en eur zonz leun a velkoni hag a dristidigez, da dizrei warzu eun amzer ha n'e ket c'hoaz pell, pa gane ar varzed-valeerien o zoniou brezonek war ar vuioù hag an tachennou, ha pa

gave ar Vretoned, betek er marc'hajou hag er foariou, peadra da lakat da dridal o c'halon ha da rei d'e da anaout e oant c'hoaz er gêr, e oant c'hoaz en o bro.

Breman, ar varzed valeerien a zo kollet an haden ane, 'vel eus kalz a dreo mat-all ; n'eus ken seurt gant *Fañch ar Minous*. Ar Vretoned a gan c'hoaz brezoneg war an tachennou a zo arru koz hag awechou o brezoneg traitour a ra dismegans d'an honestiz ha d'ar relijion.

Daoust da ze, ne oa ket ken poanius klevet ar re-ze, bastarded, koulskoude, evel m'eo klevet ar re-man, divroidi hudur, gant o zelten ru hag o « akordeon », o kanan, war doniou brezonek, treo gallek ha n'o deus na stumm na neun evit Bretoned. Trist ha poanius eo gwelet divroidi hudur o kemer war an tachennou, war ar ruioù, plasou gouloù ar varzed valeerien hag a ouie, da vihanan, kanan brezoneg, ha lakat eur strilh eus ar vue Vreton da baran en o gwerzioù.

Trist ha poanius eo, en gwirione, klevet brini ar broiou krec'h o koagal 'lec'h ma kane gwechall estized hon bro !

Evelse 'man kont. Bep ma falc'h endro d'imp falc'h an Ankou, e welomp hon bro o kosc'han, evel eur ween goz ha n'hall ken bontan tölou neve da dere'liel plas ar brankou dizec'het. N'eus ket da laret ; bue Breiz a dec'h, a-zil, dre lies a doull, dre lies a faout ; red eo hon gwelet 'vit gallout niveri ha muzulian nag a gollou a ra bemde Breiz-Izel. Skler eo goût perak. Stag omp ouz Bro-C'hall ha red d'eomp bean dleourien d'ei, da bep kammed a reomp. Forz peseurt micher a ra ar Breton, forz pe baour pe binvik eo, pe wizek pe dizesk, kement a zervij d'ean evit al labour, evit ar studi, a deu d'imp eus Bro-C'hall hag o deus o hano en galleg. 'N eur gemer an dra, ar Breton a gemer ive an hano gallek, rak n'eus ket a c'halloud a-walc'h da vadei en e yez kement a deu d'ean a-ziavez bro.

Lakomp ze sklêr dre eur skouer. Ar Breton a wel ermeaz e vro doareou neve hag alies talvoudusoc'h evit e re da labourat. Mar gall e heuilho ar c'hiz-se ; ha gant ar c'hiz, e kemero ar gir gallek a ya d'e heul. Ze zo gwir 'vit kant ha kant tra.

Setu breman ne glevet ken komz nemet eus *binan* hag eus *binai*, e lies a deroer ha ne oa gwechall anavezet enne nemet ar gir c'hoennat. Eus eun haderezh ne vo ken gret nemet ar *semoir*, an digoanvenerezh a zo eun *écriteuse* ; eun ôzerez ed a zo eun *trieur*. Ar Vretoned eo manet o yez warlerc'h o bue ; bemde ar vue a vout warme war rôk, hag 'velse, ar yez a chom zac'het mui-ouzmui evel eun den hag a vefe sammêt gant re a labour, kollet, mouget e-kreiz e streuveul.

Setu eun perak ec'h a an « Hini Goz » da « Chal-lez ». N'he deus ket amzer da dizrei warni he-unan, da 'n-em zonzal ; n'hall ket bevan diouz he hue he-unan.

Pa zell pegement eo dilerc'het n'he deus ket a c'hoant, zoken, da dizrei ; dizeblant, e loska he yez dre eo start he lakat da skoulman gant he bue.

Breiz dizonz hag dizeblant a ya d'ar foz a-ratoz kaer, hep keun na d'fenez. 'Vit al loden vras eus ar Vretoned, eur zôn c'hallek a dalv eur zou vrezonek, dreist-holl, ma ve kanet d'e war eun ton brezonek.

An treo-ze holl a zonzjen disul, o tizrei eus an

oferen seiz eur, melkoniet kaer, ma spered en kanvou.

Breman 'zo tri-c'hant vla, 'zo bet gret eur pont etre Breiz ha Bro-C'hall ; ar pont-se a goll ac'hannomp ; keit ma teuio d'imp dre ar pont-se bara gwenn gall, ne skofomp hon dent en hon barous. Red e vije d'imp bean hon unan, pe ober 'vel pa vijemp lezet war hon zra hon unan, troc'han ar pont, pe ober 'vel pa vije troc'het ; jachan war hon c'horf, jachan war hon spered, 'vel pa ne vije den da forniz d'imp netra, bevan diwar hon zra hon unan, diwar hon yez, diwar hon gizioù, diwar hon spered, evit ober d'e brallan war eun tu bennak, kemer lans, krenvat ha kerzet.

'Vit pezh a zell ar varzed valeerien, daoust ha ne vije ket mat da *Gevredigez Breiz* kaout Bretoned dindani da skrivan, da voullan ha da werzan zoniou ha gwerzioù 'pad ar bla, 'vit argas diwar ar vro brini du ar broiou-krec'h ?

D.-N.-D.

SANTEZ RADEGONDAN

DISKAN

*Radegondan, ken galloudus
Da rei d'imp ar pezh 'c'houlennomp,
Rentet Doue d'imp truezus,
O pidi birvidik evidomp,
O pidi birvidik evidomp.*

Gant gant tad ha mam pagan, Radegondan n'oufie ket Penos 'barz ine pep kristan Eur vue-all c'hoaz 'zo laket : Da Gloter roet 'vit loden, Ar plac'hig, d'ei gwad Rouane, Daoust ma red d'ei kalz kuajen, Glaskas bean merc'h da Zoue.

Nag holl birvidigez al lez, Nag he flourder leun a fouge, Nag ar blijadur didalvez, N'hallont merkan war hec'h ine : Ar furnez hag a gresk kened, Diskamant war Lezen Doue, Eur galon leun a izelded, C'houlenne 'n he feden bemde.

He c'halon 'deuas intanet Gant ar garante ouz Doue : An tan-ze d'ar zent 've roet, Koulz ha d'o breuder an ele. Neuze, daoust ma oa yaouank-flam, 'Touas penos gwerc'hez chomje, Ha penos d'ar bed n' vije tam Eus ar galon intanet-se.

Mes Doue 'n eus hi dibabet, Evit azean war eun tron : Kloter 'ta 'n eus hi c'hemeret, 'Vit he bried hag hon itron. Merc'h ar Roue, ha Rouanez, Aked vras 'n he c'harg laka ; Mes an dud fall gemer herez, Rak gaud eünder e ra pep tra.

Setu an ifern ijinus, Kounaret ouz he santelez, O c'houean d'ar roue oazus Eo landourc'hen ar rouanez : Na drouk-prezeg na dismegans D'he c'halon baour n'int espernet ; Mes, e Doue leun a fians, Radegondan nerz na goll ket.

Ar zou a zo aman pelloc'h a zo bet gret evit dizrei an dud yaouank da heuilh skouer ar re a gwita, dre didalcvedigez, o farkou hag o labouriou, 'vit mont da hostizien d'ar bourkion pe d'ar c'hérian. Kalz re a dud n'houlont ken labourat an douar; re nebeut a labourerien a zo, ha re a hostizien; re lies a zorn a weler en ker o tiskargan evij hag a zo kentoc'h stummet da gregi er bal pe en lost an arar. Merched ha potred, e ver troet war ar meaz gant ar vicher hostiz, evel pa vije eno an holl vad hag an holl blijadur. Ha koulskoude, ar vicher hostiz, pa ve kont evel hirie, a zo eur vicher a baourante.

An hostiz, zoken pa binvidika, a binvidika diwar goust an dud-all.

An archant a zerr n'e ket eun archant yac'h. Jachet war ho korf da labourat, ha ma tenet pinvik, gwella a ze; honnez zo pinvidigez leal; jachet war ho spered da studian, d'invori treo ijinus pe skridon kaer; ma tenet pinvik, ar binvidigez-se na rey ket a c'haou ouzoc'h; mes an hostiz, n'e ket diwar goust e gorf na diwar goust e spered e labour, diwar goust siou fall an dud eo, diwar goust nep pion bennak a gav mat ar gwintardant; archant al labourer, archant ar micherour a ya en e c'hodel. Nag a hostiz a zun evelse gwad kerent, mignoned, amezien, o skarzand'e o yalc'h hag o sikour ane c'hoaz da bakan klenvejou!

Dre eno, micher an hostiz 'zo eur vicher a baourante, gwasoc'h kalz 'vit ar re-all 'vit evitan e-unan. Labourerien ha micherourien kalz a lak eur vro da vean pinvik; mes hostizien kalz a gas anei da haour; pa drec'ho an hostizien war al labourerien, neuze trec'ho paourante war binvidigez.

An hostalirion, eu eur vro, 'zo 'vel an uhelvar war ar gwe avalou. N'e bet hep abeg an eus bet kemeret an hostiz ar bod uhelvar da lakat e pign 'us d'e zor; ar bod uhelvar a dag ar ween, hag an hostiz a dag ar vro; ma lezer an hostalirion da greski en eur vro, ar vro-ze a vo diwadet, zec'het, hag a varvo ive.

Hogen, ma talc'h an treo da vont war an tu emaint, zouden ne vo ken dre hou bro nemet daou seurt tud: ar re a ziskargo hag ar re a evo; neuze ne vo ken d'ober nemet kanan gauimp al *Libera*.

An hostalirion a zo eur walen 'vit Breiz-Izel.

Red eo kaout hostalirion; mes lec'h e vije trawalc'h eus diou, e kaver dek, hag elec'h 'vije trawalc'h eus dek, e kaver kant.

Ar re o deus micher pe bolante da gelen a yaouankiz, a dleje, ouспен dizrei ane diouz an hostaliri, dizrei ane ive diouz ar vicher hostiz, rak eur plego deus kemeret breman an dud yaouank, pa dimeont, pe da vont da Bariz, pe da vont da hostiz.

Kement-man a zo skrivet aman 'vit mal an holl, ha n'e ket 'vit ober dismeganz ouz den. Pep hini an eus e lod en droug, rak an droug a zo dre holl, dre mac'h a ar bed a-bez war an tu fall.

Pa ve klanv ar c'hoef, e renk ar c'hlenved 'n em dennan ermeaz dre eun tu bennak.

An hostalirion a zo unan eus ar goullou a ra ar c'hlenved war gorf hou bro, uzet ha trenket he gwad.

BRAOAT MICHER, MICHER HOSTIZ!

Braoat micher, micher hostiz.
Hounnez 'zo eur vicher bourc'hiz!
An hostiz, diwar grap e rér,
A ra fent gant al labourer.
Al labourer, en e barkou,
A renk d'ober hel stenn e dretou,
Mes an hostiz, braoat micher!
An hostiz kez 'n eus man d'ober!

Braoat micher, micher hostiz,
Hounnez 'zo eur vicher diskwiz;
An hostiz, diwar e skabel,
A zell a belec'h teu 'n avel;

Diwar 'n avel e teu d'ean
Archant gwenn ha ru da vernian,
Braoat micher, micher hostiz.
Hounnez 'zo eur vicher diskwiz!
Micher hostiz, braoat micher!
Ez da zeski, ezet d'ober;
Da zeski lakat dour er gwint
N'eus ket ezom a galz ijin;
D'ober kafe gant dour ha chik
N'eus ket ezom gont ar e fizik;
Micher hostiz, braoat micher!
Ez da zeski, ezet d'ober!

Micher hostiz 'zo micher dous.
Hag ouспен eur vicher lipous;
Sunan bannac'hou er weren,
Hini ru ha hini mielen,
Goude, lipat e furbouchou,
Azeet war zeul e votou;
Micher hostiz 'zo micher dous.
Hag ouспен eur vicher lipous!

Micher hostiz 'zo micher gled.
Ne bella tam eus an oaled;
Euo, c'honi wel, 'n korn al ludo,
'Vel war e dron, ar pipi du;
An hostiz, gant e gomperien,
Ra lez d'ean gant ar weren;
Micher hostiz 'zo micher gled,
Ne bella tam eus an oaled.

Micher hostiz 'zo micher ez.
'Vit goumit archant frank difrez;
N'eus ezom, evit sevel stal,
Karr nag alar, nag aneval,
Nemet eun dousen chopinon,
Eur pipi du, c'hoarzadennou;
Micher hostiz 'zo micher ez.
'Vit goumit archant frank difrez.

Ma lavar Yan d'e Janed ker:
« Janed, me 'zo skwiz labourer;
Gwezomp ar marc'h hag an alar,
Klaskomp eur vicher digailhar... »
Setu skrivet 'us d'an treujou:
YAN HAJANED 'WERZ BANNAC'HOU,
Braoat micher, micher hostiz!
Nep n'he chlask ket 'zo diaviz!

X...

KOVESION AR C'HLASKER KOZ

(Pennad diwezan).

Madou 'r re-all ne c'hoanta ket,
Evit o c'haout hep gvir ebet.

III

E gwirionez, ar paour dic'hiz gwelet gant ar beleg en d'ober, eo a yoa eno astennet war eun dournad kolo leiz.

Ya, hen oa, hogen, e pe stad truezus!

An enon a deus eus e c'hinou, ar gwad a yoa war e zaoulagad, hag e tislante ar bleo a zournadou eus e benn. An dizeper a yoa kroget ennan.

Reisaat a reas koulskoude o welet ar beleg.

— O, emezan, bennoz-Doue da veza deuet! Aon bras em boa da vervel hep ho kwelet c'hoaz!...

— Lavaret em boa d'oc'h, eme ar beleg, e c'hellel fizout ennon evel en eur mignon; ha brema, setu me dare da ober evidoc'h ar vad a c'hedid diganen.

— Sellit, neuze, zezit aze, ha selaout ac'hanon. Va buez fall eo ez an da gonta d'oc'h. Lezit ac'hanon avat da zibuna ar guden penn da benn hep trec'ha va c'homzou.

Ar beleg, a azezas war eur skaon, hag o veza lakeat e boan da gizat ar beac'h a yoa warnan, e lavaras: « Setu me dare d'ho selaou! »

Ar c'hliker koz a zebantas neuze disken ennan e-unan, hag eur pennad goude ec'h hmanadas, hag hen ha koms evelon:

— Tech ar c'hoari en doa kaset ac'hanon betek an dienez; n'em boa mui gweneg ebet evit paea va die, hag e teuas ar vourc'hizien da lakaat foar war va zammig peadra. Ne jome mui ganen ken tra da ober nemet mont da glask va boued.

Daou zervez a yoa n'em boa debret tamm, pa zigouezis dirak eur maner eus ar re gaera.

Gwelet a rean eus an hent ar c'heginou, el leac'h ma 'zo eno eun d'ruilh patred ha merched endro d'eur fourn-houarn goloet a gastolorennoù a daole a bep tu ar c'houez an dudiusa.

Ya, yer, hoidi, ha traou-all, en o leiz, a yoa o rosta dirak eun tan brao.

Eur mennoz heuzus a deuas d'in. Lakaat a ris

pep fouge dindan va zreid, ha me o vont da gaout ar mestr keginer:

— Aotrou! emeze d'ezan.

Heman n'en doa ket klevet ac'hanon o tont-hag ec'h en em gavas ken nec'het gant va c'homzou ma lezas da goueza war al leur ar podad viou a yoa gantan etre e zaoarn.

Kas a reas ac'hanon da vale gant pep seurt komzou kasaas.

— Er-mez! emezan gant kounnar, n'omp ket kustum da vaga al laouneidi. Er meza! ha bunoc'h evit an dra-ze! pe bremaik ar chas a wela ha kalet eo ho ler... Hep! distagit Kastor ha Pollux, hag hisit anezo ouz ar pez divalo-ma.

Hogen, d'an ampoent e oa gwelet eun troc'had mat a zen o tont, sonn e benn ha leun e legad.

— Pion, emezan, eo an hini en deus hardiziegezh a-walc'h da lakaat er-meaz eus va zi ar paour a deu da c'houlen eur gouder? Meur a wech, Valer, em eus lavaret d'it ez out kalz re rust. Rei a ran urz d'it da zervicha eur pred a-zaore d'an dra-ze, ha p'en devez debret diec'h e naon e ligasi anezan betek ennon.

Ma oe red d'ar mestr keginer goren e gounnar ha senti war an taol hep lavaret ger.

Kaset e oue goude va lein da gaout an Aotrou kont a Senak.

— Va mignon, a lavaras-hen d'in, yaouank oc'h, diec'h an doare, ha souezet oun ouz ho kwelet o klask an aluzen.

— Pinvidik oun bet, a liviris, hogen, kollet em eus va holl danvez er c'hoarion. Pinvidik oun, ha micher ebet n'eus bet desket d'in; setu penak n'ouien petra da ober pa 'zo oun bet skoet gant ar reuz.

— Hag eun tammig deskadurez hoc'h eus?

— Gouzout a ran leun ha skriva. War ar c'houc'hou, me gred n'ez eus ket kalz hag a ve en tu-all d'in.

— Ac'hanta, me a zo dres o klask eun den da c'houarn va danvez. Ha plijout a rafe d'oc'h ar garg?

— He digemeret a ris gant laouenedigez.

An Aotrou hag an Itron a Senak a oe mentbed madeleuz em c'henver, kouls hag o mab, ha va dever striz ou diskouez d'ezo anaoudegezh vat. Ne ris ket, Aotrou. Bez' ez eus tud digalon, a zo gant, lavaret e ve, evit pep seurt labourou divalo. Me a zo eus ar re-ze. Implij fall a ris eus ar fizians leun en doa an Aotrou kont ennon.

Eun dervez e tapas ac'hanon o laeres e archant a grabanadou.

En dro-ma ez eas droug ennan, ha n'eo ket hep abeg; bonta a reas ac'hanon er meaz, o lavaret:

— Kea; gallout a rafen lakaat an archerien da gregi ennon evit az kas d'an disheol; hogen, nan, truez em eus ouzit, kea, hag arabat e vezo d'it dont mui war a vro.

— Gwelet a ri c'hoaz ac'hanon kont a Senak, a liviris o tiskouez d'ar maner va doura serret; ya, dont a rin, n'hen tou!

D'ar poent-se ez oa trouz dre Vro-C'hall a bez; edod e poent ar *Valtam*. (1)

Tamall a ris an Aotrou koft a Senak da veza a-du gant an dispac'herien, hag evit rei eun tamm seblant d'am c'homzou e tiskouezis fals-papouren skrivet gant e-unan.

Kredet e oue, Aotrou; ha daou zervez goude an Aotrou hag an Itron a Senak a oe kaset d'ar prison a hanvet *Bastille*. O mabig a oe saveteet gant unan eus ar mitisien.

Roet e oe d'in ar maner hag a zouarou, e digol eus ar boan am boa bet oc'h ober va labour-iferu.

Prestik goude e klevis lavaret oa maro ar mevel hag ar bugel eat n'ouie dare den da belec'h.

Ar c'hout hag ar gouez a varvas ive hep m'o divije gallet dont a-benn da rei da gradi ez oant diviam. Neuze, me, Filip Fransay, a c'helleje pelloc'h beva e peoc'h eus frouez va zorfed. Fanzia rean a-grenn. Va buez, siouaz! na oe azalek neuze nemet eur verzerenti gris hag hir. Broudou e c'houstians am c'higne, hag liviziken peoc'h ebet ken evidoun nak en deiz nak en noz. Ya, Aotrou, betek va gosveziou zoken a veze trubuilhet gant huorec'ho spontus.

Setu me neuze evit kaout peoc'h oc'h en em rei a-nevez d'ar c'hoariou. Koll a ris, ha me o tont adarre da veza ken paour ha biskoaz. Red e oe d'in Ekwilat ar maner-ze am oa prenet ouz priz ar gwad, ha den a-c'houdevez na ouias petra deus da veza...

Ma ar paour a jomas a-zav eur pennadig, ha goude e lakeas e boan da zvel en e gouze, hag e lavaras:

(1) *La Fronde*, e galleg.

— Me. Aotrou, me hag a zo ama dirzoc'h, me eo Filip Franay, an hini en deus lazet ho tud ha foranet ho tanvez.

Aotroukont a Senak, an torfetour a zo en ho kalloud, grit outañ ar pezh a gerot.

Ar beleg a yoa deuet tostoc'h d'ar c'hlanvour.

— Petra livirit aze? emezan: me a zo eun emzivad, eur bugel bet kavet war an hent.

— Pa lavaran d'eo'h eo c'houi an aotrou kont a Senak! O ne fazian ket. Dio'htu em eus anavezet ac'hanoc'h. Ha c'heant bo'h'eus d'hen gwelet sklenc'ho'h? Mont a ran da ober d'eo'h kredi. Trouisit breac'h ho soutanen; holl dud ho ti o deus eun tach da uhelloc'h eget an iliu deou.

— At paour, eme ar beleg, lavaret ac'h'eus ar wirionez. O va zud-ker: va zad!... va mamm!... Roit d'in, Aotrou Doue, nerz a-walc'h evit pardonit d'an den-ma...
— Pardoni a c'hellez, eme ar c'hilasker; paet em eus, ker zoken. Pa 'z oun deuet da veza paour evit an eil gwech, em eus gwelet mat peger bras oa va zorfed, hag ez oun deuet a galon vat da veza paour-baleer, evit gellout eun dervez, restaol ar pezh am boa laeret. Bevet em eus en diouer a bep tra ha kouezet a ran war ar c'haled; hoggu, lizio me a zo paet, ya, hen lavaret a c'hellan d'eo'h, kont a Senak; setu ama bo'h'eus archant; kemerit anezan, priz ar gwad eo!

Hag o veza dastumet an tammig nerz a jome gontan, Filip a yeas d'eun arbel hag a dennas hozadour aour anezi da dreurel e-c'harz treid ar beleg. Hema avat a zistroas e zell gant heuz. — Petra! eme ar c'hilasker, ne fell ket d'it kemeret ar restaol? Ne fell ket d'it eta ken nebeut ankounac'haat va zorfed?...
Ar beleg a zavas e vouez hag a lavaras gant madelez:
— Pardoni a ran d'it, Filip Franay, evel den, hag, evel beleg, e savan va dourn da rei d'it an absolven zantel.

Ar paour a varvas e peoc'h antronos vintin, hag ar chalonni na ziskuilhas da zell ar pezh en doa klevet gantan. Hogen, ne fellas ket d'ezan implija evitan e-unan an archant a yoa bet restaol d'ezan.

Lakaat a reas an archant-se da zovel eun hospital evit digemeret ha sevel ar vugale baour dilezet gant o zud pe emzivad.

Bemdez em e hedennou e lavaras betek e varo, ha gant pegement a zaour! ar c'houzon-ma eus ar beden desket d'omp gant Jezuz-Krist e-unan:

« Ya Zad, a zo en neuv, pardonit d'omp hor mankou, evel ma pardonomp d'ar re o deus noazet ouzimp. »

PLUENZIR.

MOUSTREIG

An dra-man oa er goanv, en deizioz war-lerc'h Nedeleg pa oa teo an erc'h war an douar, eur pardavezh hag edo dre-holl ar « gweun war c'horre » zoken er falla parezioz eus hor bro.

Inouet-marzo du-man, goude va c'hoan, e sonjis mont d'ober eun tom da di tonton Yan ar C'hallez, er geraden nesa. Kalz tud a veze atao eno, kozidi ha yaouankizou, goude o c'hoan, evit se-laou Yan, an tonton Yan, evel m'oa galvet gant an holl, o tanevellat dirak eur c'hef o tevi en tan.

Pa oan o tigeri an nor, eur vouez a zave en diabarz:

« Gwechall ha gwechall all, an nep n'en doa ket... »

O klevet trouz e toul an nor, tonton Yan a davas mik gant e varvañ hag e savas e fri da zellet ha pion a c'helle beza ken divezet o tont da zirenka an traou ha da viret outañ da vont pelloc'h gant e gontaden.

— « Done i'ho pennigo! » emeva o vont tre barz an ti.

— « Ha! sell 'ta, te zo aze, kamarad! Deus aman da gemeret renk en-dro d'an tan. »

An dud raktal d'en em sarda evit ober eun toullig bihan d'eu, rak anavezet e oan evit beza unan eus gwella hostizien an ti.

— « Te anavez Moustreig? » a c'houlenas ouzin Yan pa oe siouleat an traou.

— « Moustreig? emeva souezet. Nan, zur, tonton Yannig, biskoaz n'em eus klevet hano anezan. »

« Edon o vont da gonta Moustreig d'ar reman pa 'z out arruet. Breman e c'hellan kendele'her... »

Ha goude beza tanet eur c'horn-batun du, koz mil-goaz, da vegeri toullou e fri. Yan a goumansas dre ar memes gerioz hag a ranke lavaret ato arak deraoui gant pep marvailh:

— « Gwechall ha gwechall all, an nep n'en doa ket a lagad a oa dall, ha bep breman bepred an nep n'en deus hini na wel ket. Gwechall eta ez oa o chom eur miliner en milin ar Beler hag a oa hanvet Fanch ar Berr. War studi ar velegiach e oa bet, ha rakse oa desket bras, hag an dud vat eus ar c'harter a grede gwir-baler ez oa sorser.

Me, da genta, na rean nemet gwap ouz ar re a deue da lavaret ze d'in:

— « Miliner ar Beler, sorser! Allo 'tat c'honi 'zo kollet ho penn, va den mat? » a respondou da gement hini a errue gant hag a gouze d'in eus an dra-ze.

— « Ya, Yan ar C'hallez, ya, sorser... ya brao, rak teurel e ra sorserer war an dud... »

— Ravoderezh gwra'ched koz evel honneuz eus ar Roc'h! »

Koulskoude eun devez, diwar va c'houst va unan, e teskis e oa sorser Fanch ar Berr, ha setu aman penaos e oa darbet d'in lezel va c'hroc'heun en e di:

Kalvez-milin oun bet ato dre vicher. Eun devez, ar beleg manket am galvas da vont d'e di da renka eur rod-vilin bennak ha ne yea ket mat en dro. Mont a ris hep mare'hata, rak Fanch oa unan eus va gwella hostizien, ma n'oa ket zoken ar gwella. Evel m'ema milin ar Beler eur c'houst-tellad mat ac'hale, e chomen atao da loja er vilin; rak d'ober petra ez ajen da goll amzer o toul d'ar gear pa oa frankiz a-walc'h d'am loja eno?

Goude beza debret va c'hoan: eun tam patatez gant leaz ribod d'o zouba, ez is d'am gwele e traou an ti... Kouezet a ris buhan a-walc'h, rak eur gwall-deveziad em oa bet, ha da oa d'in diskwiza abenn an devez warlerc'h a vije ken gwaz all bemdez...
War-dro hanter-noz ez oun dihonet en eun taol!

Santout a ran eun dra bennak o voustra war va gar, hag a vale a neboundigoz bihan hed va gar ha goude-ze hed va c'horf.

— « Asa, daonet, a zonzis, petra 'n diaoul a deu d'am direnka evelhen? »

Teurel a ris va dorn buhana ma c'hellen war al leac'h ma zanten an dra dizanav-ze o vale...
Poan gollet! Ne gavis netra, mes avat an aneval direnker a yoa nijet kwit hep mar, rak ne zanten mui seurt.

Ha me kerkent d'en em rei d'ar c'houstet hep teurel muio'h a bled ouz an dra ze!...
Goude beza moredet eun hanter-eur bennak, ar memes aneval — pe me oar petra? — a dennas d'am egazi adarre. E lezel a ris tre da zont betek va feultrin. Neuz pe ploupi! ha va dorn war al leac'h-se; mes poan gollet adarre, netra na dapis... nemet eun tan poan em stouok rak kreuz diot em oa skoet.

— « N'eo ket a-walc'h an dra-ze, a liviris; red eo d'in gwelet petra 'zo war va zro... eur raz pe eur c'haz, m'arvat!...
Furchal ha difurchal, trei ha dizrei linsarion, pallenou, kolc'hejou... a ris, mes an aner: raz na kaz na oe kavet. Betek e-touez ar c'holo e klaskis, mes ne oan ket avansetoc'h.

(Da heuilh). Marvailher Kerneleon.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

COADOUT. — Gwall-chans. — Perrot, labouner er Porz-Hir, en Coadout, a zo bet koneet eur gazeg d'ean en eur veleguez gret en e bark da dennan mein 'vit an hec'hou bras. Ar gazeg a dalveze eiz kant lur. Perrot an eus bet c'hoaz kollon moc'h ar bla-man. Ar seurt-se a dleje bean sikouret gant archant ar gouarnamant a ve gret gantan kement a wall-dispiznou.

GWENGAMP. — Ar pesketaer drouk. —

Eur pesketaer, Savidan ve gret anezan, a oa o pesketa war ribl an Treo, pa digouzas eur zoudard elec'h ma oa. Ar pesketaer, o klevet an trouz, ec'h eas dioug ennan, a grogas er zoudard hag a sillapas anezan en dour.

Marfad, ar pesketaer-ze 'nevoa tapet pesk ebet. Ar pezh an eus tapet, avat, eo tri devez prison.

LOKMIKEL-AN-TREZ. — Ar votadeg. —

Disul e oa botadeg en Lokmikel evit hanvat eur c'houssailh. Lokmikel a zo 'vel dispartiet etre diou loden, tu al labourerien o chom war ar meaz, ha tu ar c'hrak-otrone o chom er bourk. Al labourerien a zo kristenien ha Bretoned vat: bourc'hiz, peurvuian, n'int nag an eil nag egile.

Gant al labourerien eo et an trec'h, hag eus a-bell 'vel ma wetet aman warlerc'h.

Listen al labourerien: Béver, 86 mouez war 113 boter; Nedellac, 82; Coadalen, 81; Loutraje, 81; Daniel, 89; Drouion, 81; Thoaz, 79; Jacq, 79; Moulic, 78; Brozec, 75; Bontic, 69; Roche, 68.

Listen ar voure'hizien: Guégou, 33; Daniel, 32; Solignac, 31.

LOUARGAT. — Tan-gwall. —

Eur ti Hamel, labouner en Sant-Eler, eo bet kroget an tan epad ma oa o toran. Ne oa taken dour ebet ha n'eus bet gallet nemet harz al lojiz da vean devet.

Eiz kant lur koll a zo bet.

PERROS. — Eul lestr kollet. — Redaleier listri a oa disul en Perros: an aval a oa kreuz: unan eul al listri a yeas da 'u em skei en eur roc'h o tizei d'ar gear. goude bean gouezet ar priz kentan, hag e oe lonket gant ar mor. An daou den oa enni a oe heuet, ar perc'hen Guillaume Léon, hag ar mous Grelhriou, oajet a bevarzek vla.

War an treaz, e oa ehad ha dansou. Pa de klevet ar c'helon, oe troc'het krenn d'ar blijadur.

PLOUHA. — Kanvou. — An otro Ville-Hesbret, m'er Plouha, a zo maro. Koneet oa bet neve so, eus e wetur, hag aboue 'n evoa ket 'n em gavet. Eur gwall-goll eo evit Plouha hag evit ar vro tro-dro, rak an otro-man a oa eun den a galon, brudet kalz mesk an dud.

ROSpeZ. — Kanvou. — Digwener eo be'z arruet er ger korf Augustin Maux, martolod lazet war ar Couronne.

Bean oa eleiz a dud deut da digemer anezan: ar souprefed eus Lauou, mer ha konsailherien Rospez. Kurunennou kaer a oa war ar c'har kanvou, kinniget gant mignoned an hini maro.

Da vihanan, en e barouz hag etouez e dud, pedet e vo evit ar martolod paour. Aman ne vo ket, evel zo Toulon, argaset ar beleg diwar e dro.

TREMEVEN. — Pardon santez Radegondan.

— Kaer e oa ar pardon evit ar bla evel ar blaio atok. Desadorn da noz e oe graet eun tantad war hent bras Sant-Jakez, damdost da dour Koa'lin. Kalz a dud a oa eno, hag en o zouez otro person Ar Faouel. Disul ar beure e tiredas kalz a belerined nemet e oe leun-kouch an iliz evit an ofisoù. Kanet e oe an oferan gant an aotrone Guillou, mestr-keleiner, ha Gouezou, kure Gwengamp. Heman a zisplegas kaer 'n e zarnon buer ar zantez. Pôted Favrit a oa deut ivez gant o zabouline hag o zrompilhou d'ober eno d'hon patronez ha da gaeuat ar pardon. Bravat devez e oe ar pardon e gwirionez evit an holl!

BREIZ-UHEL

LOUDEAC. — Kanvou eun archeskob. — An Otro Carmene, archeskob misioner, a zo neve-varo en Loudéac elec'h ma oa deut da ziskwizan. Beziet eo bet dimerc'her. Eskob Sant-Briek ha pemp eskob-all a oa en intermamant.

An Otro Carmene a oa bet hanter-kant vla er misionou; oajet e oa a bevar-ugent vla. Eur Breton a c'hiz-koz e oa hag an eus ket gret epad e vus enor bras d'ar vro.

Gant he den kri Radegondan
 C'houlou, 'n han Doue, aotrei
 Hi lezel da bellât dioutan.
 'Vit kuz e Saix, 'n eur manati.
 Dour, bara hai, gwiziennou,
 A oe hec'h oll madurez;
 Ar c'hiz-se da Vro ar Poitou
 'Roas he brasen kinklerez.

War al ludu, eur gouriz-reun
 D'an noz a ra d'he c'horf gouzanv;
 He skiber a roz 'zo 'vel leun,
 Gant ma kav an holl boanio skanv.
 Prestig e savo eur gouent
 E Poitie, hag he vertuzio,
 Anaveet, 'vel el lez kent.
 A diskuilh d'an dud hec'h hano.

Hon Zalver da Radegondan
 A diskuilh heur he maro,
 Ha dek deiz goude, hep krenan,
 E oe stoket gant an anko.
 Breman, euras eharz an Env,
 O kanar e-touez an ele,
 E kinnig d'imp he skoazell grenv,
 Mar hi fedomp gant eur gwir fe.

Teulet evez d'ar barouzig,
 Hag oc'h ganti bepred karet,
 Hag ive d'ar Vro reuzedik,
 E pehini ho peus bevet;
 Rentet he c'halou da Jezuz,
 Da Jezuz roet kalono
 Ar bec'herien gez gwelvanus,
 'A lavar d'ac'h o fedenno.

Pedet 'vit ar Pastor, pedet
 'Vit e bobl, 'dle ren da Zoue;
 D'an dud niverus diredet
 Da Dremeven, miret o fe.
 Pedet, o pedet 'vit Bro-C'hall:
 Gret ma viro feiz he zud koz,
 Ma teuy nerzus evel gwej-all,
 Ha brudet 'vel en amzer-goz.

Satan glask lemel diganimp
 Ar fe a ro ar vertuzio:
 Pebez gwalleur e vije d'imp
 Dishanveli diouz hon tado!
 Mar distroomp da baganed,
 Prestik 'vo gwelet hep elhan,
 Siou ha krizder al loened
 Dre hon Bro garet o tiwan.

F. G.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deut da vale en Breiz

d'he c'hamarades en Paris

(KENDALC'H)

Kerrouiz, 24 a viz Eost 1908.

Lusi gez,

Setu ni didrons goude eun devez mat a vrud
 hag a jolori. Sonj d'it oan bet douget an de-all
 war ar wastel! Mes te n'ouvezet ket petra eo bean
 douget war ar wastel. Pa ver war achui dornan
 en eun ti, tri pe bevar pôtir yaouank a deu da
 gere'hat ar geginerez. Kaset e ve d'al leur hag e
 ve douget tro-war-dro war eur feusken ed. 'N eur
 ober tro al leur e ve gret eur pöz gwech an amzer,
 ha neuze ve hopet a-bouez penù 'vit kas ar c'helo
 dre holl e ve klozet an est en ti hen-ha-hen.

Ni oa diou geginerez hag hon diou oemp douget.
 Goude, avat, ar bôtred yaouank a ve en gortoz da
 gât bep a vane, hag e ve red klask ar voutailh...

N'eus nemet se a zisplij d'in gant ar Vretoned,
 ar re 'm eus anaveet betek breman: ar gwin-ardant
 'zo eun doue eyite. Pemp voutailhad gwin-ardant
 a oa bet evet en Kerrouiz eo eun devez etre eur
 pemp warungent a dud. Mez am eus o lakat ar
 merc'hed en kont, ha koulskoude red eo laret
 'zo darn ane hag a zo trec'h da lies a bôtir,
 war ar c'hrog-se.

'N eun ti, tost da Gerrouiz, 'zo bet c'hoarvezet
 evelse eun tol fentus diwarbenn eur voutailhad

win-ardant. (Dre aman, da vihanan, kalz a gav an
 tol fentus; 'vidon-me, ne ran ket). An de ma oe
 dornet en ti-ze, pôtir ar mekanig an evoa digaset
 gantan 'n e c'hodel eur voutailhad win-ardant
 hag eur voutailhad ioul. An ioul oa 'vit lardan ar
 mekanig, hag ar gwin-ardant, 'vit lardan e c'hor-
 zaillien. Mes ar c'hontrol a c'hoarvezas. Ar pôtir,
 o vean dija krak-veo diouz ar beure, a gemeras an
 eil 'vit eben hag a lakas ar gwin-ardant da lardan
 ar mekanig. Ar voutailhad-all a glenkas e koste 'r
 harz, evit gallout mont, gwech ha gwech, d'he
 gwelet e kuz. Setu, kerkent, unan eus ar merc'hed
 a zizoloas ar c'houfed, hag o vean ma oa dirankon
 kaer, ha laouen bras gant he c'havaden, e stagas
 he fenn ouz ar voutailh. Gallout a rez kredi e reas
 begou fall, pa zantas ar vlaz.

Ne houllas ket, koulskoude, laret netra. Er
 c'hontrol eo, kas a reas reo-all da welet ar voutailh
 hag a oe tapet evelti. Eus an eil d'egile, ar voutailh
 a oe skarz, ar re a oa bet tapet o vean 'n em
 glevet, hep tol, da dapout ar re-all.

Pan arruss ive pôtir ar mekanig, ne gavas nemet
 eul lonkaden 'vit e lod. Drouk oa ennan, ken a
 oa; mes pa danvaas, e torras d'ean raktal. Kouls-
 koude, ne oe gouveet nemet da greiste e oa ivoulet
 ar mekanig gant gwin-ardant.

Ar peurest, avat, eus an de, tro an ivoul a reas
 tro al leur, ha ne oe gret tam labour vat ebet ken...

Allas ya! an istor a zo fentus tre, n'e ket gwir?

Mes me glev ac'hanout o lavaret: Ha Matild,
 daoust pelec'h eo mañet? Et e oa ma fenn gant
 boutailh an ioul: koulskoude tro Matild a zo
 bravoc'h c'hoaz.

E oan o lavaret d'it ar wech-all em oa 'n em
 gavet ganti, en pardon Itron-Varia-an-Ele, pa oa
 en kaoz gant eur pôtir yaouank.

Chom a rejomp eur pennad da zellet oute o zri,
 rak Rose a oa gante ive. Ar pôtir a oa stipet evel
 eur markiz, tronchet e varbouchou, eur c'holier
 gwenn gantan da dapout betek e zionskouarn,
 eur berr-manchou hirroc'h kalz 'vit e vanchou, eur
 re vanegou liou ludu hag eur vaz voan 'vel eur
 c'hlasten, hag e oa harpet warni drek e gein gant e
 zaou zorn. E wiskamant a oa nevez-flamm ha ken
 reut pep peiz anean hag e golier. Mar oa moust
 Matild, he c'hamarad a oa ive.

— Matild hag hec'h amoureux! eme Gwenn.

— Hennez! eme Fauchig; gredan ket! Hennez
 eo mab ar c'hereer a ve o sevel ar c'hustum, ar
 zadorn, en toull kêr!

Mont a rejomp treskek d'e 'n eur vale. A-boan
 ma teurvas Matild ober eur pleg d'he zog ha d'he
 fluen, pa dremenjomp diraki. Ouz Fauchig, dreist-
 holl, e reas eur zell dismegansus, rak e zilhad a
 oa pell warlerc'h re he bourc'hiz.

Difuni a rez. Lusi, petra zo bet c'hoarvezet
 goude? Mab ar c'hereer, an hini a zine e lizerou
Amédée de Kersko, a gredas mont da c'houlou
 Matild gant he zad. Herve, ar zodez paour he devoa
 kredet kement hen devoa kontet d'ei. Setu pa grede
 d'ei n'he devoa ken nemet lavaret ya, hag e tigorjed
 diraki dorjoen eur c'hastel kaer, hag he dije gwe-
 tur da vale ha mitizien eleiz d'ke serviji, pa grede
 d'ei e oa o vont da vean kontez pe markizez,
 neuze oe disklriet d'ei eur beure, gant he
 breur kounnaret, penôs Amédée de Kersko a oa
 Thomas e wir hano, mab eun tammig kereer,
 o sevel ar c'hustum en Lannou war an aman hag
 an no; e holl noblans e oa bean pevare skrivagner
 en ti eun noter; e vadou a douge ezet war e
 choug, hag e gastel na oa ket kement ha kraou
 ar zaoud en ti he zad...

Paour kez Matild! Aboue ne 'm eus ket gwelet
 anei. Herve ne 'n em ziskoude da zen ha ne ra
 nemet gouelan!

Kenavo, Lusi gez. Eur eontr-all d'in a zo bet
 aman o c'houlou ac'hanon da vont d'e di, ha 'm
 eus aon, kentan lizer az po diganin, ne vo ken
 eus a Gerrouiz.

Az priata a ran etre ma diou vrec'h.

TEREZA.

Goueliou ar Zakramant en Londrez

En Londrez e zo da vean, eus an 9 d'an 13 a
 viz gwengolo, eur vodadeg vras en enor d'Hon
 Zalver en Sakramant an oter. Betek breman 'zo
 bet naontek « Congrès » pe bodadeg evelse er
 c'hériou bras eus ar bed.

Hini Londrez a vo unan eus ar re bouezusan.
 An Tad Santel ar Pab a gas eur c'hirdinal war e
 hano, ha 89 kirdinal, arc'heskob hag eskob, hep
 kontan unnek Tad Abad ha niver a veleien, en
 em gavo en Londrez gant ar gouel-man.

Hon Tad Santel ar Pab a stag ouz ar gouel eun
 induljans a seiz vla ha seiz gwech daou-ugent
 devez evit piou bennak a bedo, epad pemp munut,
 dirak Oter ar Sakramant en eun iliz, evit ar gouel
 ha silvidigez Bro-Saoz.

Piou bennak a bedo memes tra, goude bean
 komuniet, a c'honeo eun induljans plenier.

Epada ar gouel, e vo lennet eteiz a labouriou gret
 diwarben Sakramant an Oter. E-touez al labouriou-
 ze 'zo meur a hini hag a aparchant ouz ar Vre-
 toned, ouz o oteriou gwechall-goz hag ouz o doare
 d'enori Hon Zalver en Sakramant an Oter.

SANT FRANSEZ HAG AN TREDE-URZ

War dôn: *Lez Breiz*, hag a zo ive hini: *Eurus an hini*.

DISKAN

*Kanomp meuleudi, kanomp mil bennoz
 D'hon Tad sant Fransez barz er baradoz.*

Hon Tad sant Fransez, eus lein an envou,
 Seloutit mouez ho pugaligou.

Selaoutit mouez ho pugaligou
 Deut da gana d'eo'h fors meuleudiou.

'Vel eur serafin, ho kalon, Fransez,
 A yoa entanet gant ar garantez.

Nemet kroaz Jezuz, o sant benniget,
 War an douar-ma n'ho'h eus ket klasket.

He c'havet ho'h eus hag he brietet
 War menez Alvern pa oec'h gouliet.

Piou a lavaro nerz ho karantez,
 Karantez dispar 'vit ar baourentez!

Dilezet ho'h eus pep tra da viken,
 Evit beza holl da Jezuz hepken.

Jezuz, en distro, a ro d'eo'h grasou,
 A rannit kerkent gant an holl boblou.

Piou a nivero an oberou kaer
 Great ganeoc'h e skeud kroaz sakt hor Zalver?

E skol ar C'halvar, Fransez, c'houi zeskas
 Pegement e konst ar pec'hed, siouaz!

Kement e karc'h an aotrou Doue
 Ma felle d'eo'h kas d'Ezhan pep ene.

Evit ma vezo an envou poblet
 Tri Urz en iliz ganeoc'h 'zo savet.

En tri liorz-se nag a vokedou
 A daol gwella c'houez hag ar c'haera liou!

Na pebeuz lignez hizio en envou
 A gán da Fransez o meuleudiou!

Evidomp-ni eo, klevit, kristenien,
 E sao 'n Trede-Urz, urz ar binijen.

Er stad santel-ma, savet gant Fransez,
 Ema evidomp ar zilvidigez.

Hervez komz ar Pab Leon treizgevnet,
 An tredeuzriad a vezo savet.

Miromp hon reolen, miromp hi dalc'hmad,
 Da veza eun deiz kurunen hon Tad.

Aotrou sant Fransez, pedit evidomp,
 Skoazel diganeoc'h holl a c'houlennomp.

Plijet dibrada hor c'halonou paour
 Diouz traou ar bed-ma: enoriou hag aour.

PLUENZIR.

Le Gérant: F. GUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

ROUMANANCHOU

KENGEROEN :

EMENNNOU-KONVERZ

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

An Aotrou TOSSENIEN, 27, bali Charner, a zigemer aez !

Ar brezonek hag ar feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FERNEX AN GEIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz,
Gant ar galleg ez aio a Vreiz.
FERNEX AN GEIZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar foiz eo ; ma ve trec'het,
Ouspen ar Vez, e ve Pec'hed !
MILIN.

RETRED AR VELEIEN HAG AR BREZONEG

Kridi a ran e raio plijadur da oll lennerien *Kroaz ar Vretoned* klevet pegement eo bet meulet Breiz-Izel hag ar brezoneg gant an Otro 'n Eskop en retred kentan ar veleien.

Aboue nautek vla, emean, on deuet da chom en ho touez ; stag mat eo ma c'halon ouz Breiz a garan ; fellout a ra d'in e ve dalc'het ha disket ar brezoneg, e ve miret e-mesk an dud gwiskamancho kaer ha gizio santel ar Vretoned koz, o zado.

Achu ar retred, ha ken mont araok goude bean debret lein, emean ar c'hiz gand unan eus ar veleien da drugarekaat an Otro 'n Eskop ha sarmoner ar retred.

Evit ar bla, an Otro Ollier, chaloni ha personkanton Bourviriac, eo a gomzas en hano an oll veleien a oa e-barz ar retred. Dies a vije bet d'eun all bean muioc'h helavar, hag eun dudi e oa evit peb-unan sileo pegen brao e tisplege e gomz ha petra a lare. Ne ankocas ket, a dra zur, drugarekaat an Otro 'n Eskop eus ar meulodi roet d'ho bro ha d'ar brezoneg. O vean n'on ket evit adlaret penn-da-benn e gomzo, setu aman, da vihanau, lod ane : « Goude bean komzet d'imp gant tris-tidigez eus ar brezel kri groet a-eneb d'an Iliz, eus an oll dreo drastet ha laeret, ho mouez a zeu, en eun tol, da zederat ha da ganau, evel war eun delen aour, meulodi d'ar pez a garomp ar muian er bed : hon bro Breiz-Izel.

Evel eur Pastor mad, c'hoi a unane en ho kalon hag en ho soursi *Galloed* ha *Bretoned* an eskopti. D'ar rumm kentan, e larec'h : Breiziz oc'h ive. Miret doareo mad, gizio yac'h ha furnez ho tud koz. D'an eil rumm e zelennech eun dra bennak c'hoaz ouspen : « Ne dilezet biken gwiskamancho brao ha kaer ar Vretoned ; dreist-oll, delc'het mad gant ar brezoneg, ar yez-ze ken skelt ar breur d'ar fe.

Ha ni a zileoe, jua ganimp hag anaoudegez vad en hon c'halon, penos hoc'h eus pleet d'ober ma vo miret ha disket mui-ouz-mui ar brezoneg... Gant se e kerset war roujou zeut koz hag eskibien Breiz. Ar yez-ze komzet gwech-all gant sant Briek, sant Malo, sant Pol, sant Caourantin, piou an eus hen miret tro 'pad meur a gant vla ? Hon eskibien, hon beleien, hon tabo misionerien. Nemet huuvreal a rafer, eo arabad nac'h o deus groet mil vad d'ar brezoneg en hon bro, tud a skiant evel ma oa sant Ervoan, tud speredet evel an tad Maner, an otro Graveran ha meur a hini-all. Disul diwean, de warlerc'h gouel ar Werc'hez Hanter-Est, ec'h is da gimidi diouz ma yontr karet, an tad Rot o vervel, ha da zougen kaon d'e varo.

Tro 'pad tri ugent vla pe wardro, eo bet o vont eus an eil parouz d'eben, ha meur a wech, o zarmon d'an dud en brezoneg, e-barz an eskopti-mau hag e lec'h-all

Komz a re ken mad ar brezonek ken eo bet miret darn eus e gomzo evel lavar gant an dud, ha ma zo delc'het zonj eus e zarmonio evel skouer da brezeg en brezoneg. Kement o deus anaveet an abostol zantel-man a hall kridi eman breman e iue er baradoz, hag an iue-ze a vo a-unan gant

sent Breiz da skuilh bennoz warnoc'h abalamour d'ar vad hoc'h eus groet evit ar brezoneg en hon bro. »

An Otro 'n Eskop a sileoas gant levezeg komzo ken mad, ken fur ha ken gwir ; ha, goude bean drugarekaet a greiz kalon an Otro Ollier : Ya, emean, karout a ran Breiz-Izel hag he yez koz, ar brezoneg. Evit ar bla, en pad pevar miz, on bet e-mesk ar Vretoned oc'h ober tro ar Gonfirmasion er parouzio. Digemeret dre-oll gant resped, gant prez ha gant karante, ma a gav d'in on deuet ive da vean gwir Vreizad.

A hell 'zo, adalek ma bugaleaj, e oa em ihe danve ine eur Breizad. Breman pa 'm eus gwelet a dostoc'h, anaveet ha darempredet ar Vretoned, ma c'harante evit Breiz-Izel a zo deuet da domman ha da virvi ; ha, gant an nebeut brezoneg em eus disket bete vremen, ec'h hallan da vihanan laret d'ac'h : « Breiz a zo ive ma eil bro, betek ar maro, betek ar baradoz. Breiz a zo hag a vo ma bro garet.

Goude ma maro, ma c'horf a ziskwizo war douar Breiz en-kichen an otro Fallières ; hag eus Breiz, mar plij gant Doue, ma ine a rajo d'a baradoz... » N'eus ket pell on bet kaset gant ar vedesined da dremen ter zun en eur c'horu ar Franz, hanvet ar « Vosges ». Laret a rent d'in : Ar vro-ze 'zo heñvel ouz Breiz. Achanta, n'eo ket. Mar zo eno meneier, koajo ha traouienno, kaeroc'h c'hoaz eo Breiz-Izel. Mar zo eno sent brudet, evel sant Per Fourrier en Mattaincourt, n'eus sant ebet par da zant Ervoan :

..... N'en eus ket unan,
N'en eus ket eur zant evel sant Ervoan.

Hast ha jua a oa ganin, eta, distrei d'am bro. d'am bro Breiz-Izel ha d'ar brezoneg e fell d'in diski tamm-ha-tamm... »

O tennan skouer diwar an Otro 'n Eskop hag o heuilh e alio fur, ra chomo oll Vretoned Eskopti Sant-Briek stag mat ouz o bro ha troet a-du gand ar brezoneg !

X...

GOUEL PLOUNERIN

Danzeet a zo en Plounerin gouelioù eus ar c'haeran gant *Breuz ar Brezoneg* hag he mignoned.

Ar gouelioù a vo, n'e ket ar meur. 8. mes ar merc'her, 9 eus ar miz-man, da diou eur goude kreizte.

Bean vo :

- 1° Deuz ar beure, lennadeg.
- 2° Da zion eur, dastumadeg ha « défilé » ar « stade Lannionnais ».
- 3° Ar pez-c'hoari « Ar gwir Breizad » mesket gant eur gouferanz pe diou, ha kanaouennoù.
- 4° Roadeg prizioù d'ar vugale.
- 5° Labour ar « stade Lannionnais ».
- 6° Tombola.
- 7° Eur gir da glozan.

Eur pez kaer, prijou, c'hoari-zac'h pe tombola, prezegennou, sonioù, ne vo Breton ebet eus ar barouz hag ar parouzioù diwardro hag a hallfe chom er gêr.

An daou gantig gant PLEUENZIR, bet moulet ar zur-all, o deus bet an imprimatur digant an Otro eikel-bras Ar Pennec.

EUR C'HANV

Maro an tad Rot

Ar bevarzekve da viz mae, derc'heñt gouel Maria hanter-east, e varve e Kemper an tad Rot.

E-touez ar Vretoned, deat eun tam war an oad, piou n'en deus ket klevet komz eus an tad Rot en devoa gwestlet e vuez da brezek reirejou dre ar vro. Pa varvas an tad Maner, e oe klevet dre Gerne evel eur gouelvan, eur glemmadeg : Maro eo an tad mat ! Kement-all o dije gallet Breiziz laret eus an tad Rot p'en deus kerzet enpad hanter kant vloaz war roudon an tadoù Nobletz ha Maner.

Ganet e oa e parouz Kergrist-Moellou. E diegez, d'ezan brud vad e-touez ar re wella, eu devoa pourchaset d'an iliz meur a velez, en o zouez Feansez Rot, person Rostren, hag ar chaloni Jozef Rot, mestr-kelenner er c'hloerdi bras. Kaset d'ober e studi e Plougerne, an den yaouank a oa ken lemm ha ken digor e spered da ziski, ken e ligouezas d'ezan meur a wech peurober en eur bloavez bepken daou vloaveziad labour. Dreist-oll e roas d'an holl skouer-vad ken evit e aket da studia, ken evit e furnez hag e c'hred da bedi. Er c'hloerdi bras e talc'has da lakaat a-wel an denezou dispar a galon hag a spered en devoa diskouezet e Plougerne. Eur wech beleget, e oe lakaet da gelenner er c'hloerdi ha biskoaz ne oa mestr na kavetoc'h na selaouetoc'h egetan.

Er bloavez 1847 eo ec'h en em zautas galvet d'ar reolen strisoc'h al leaned, ha kompagnonez an tadoù Jesuisted eo a zibabas. Gwelet e oe, abarz nemeu, e oa gantan danvez eur misioner breton, a ouen gant ar re-ze o deus graet kement da zantelaat hon bro, en o fenn Mikel Nobletz hag an tad Maner. Eur wech digoret dirak e gammejou an hent e oa galvet da vale drezan gant Doue, ne haouezas ket gant e labour santel, keit ha ma padas ennan an nerz hag ar yec'hed.

Ar zizon a zeu e talc'hfomp gant displega buez hag oberou an tad Rot. Da c'hortoz e c'houlennemp digant hon lennerien eur beden eus a greiz o c'halon evit ma vo Doue gant e ene. D'eomp-ni, lennerien ha skrivagnerien *Kroaz ar Vretoned*, eo pedi evit an dreist-oll, rak teurvezet en doa kas da *Groaz ar Vretoned*, prest goude ma oe ganet, e c'hourc'hemennoù hag e alioù presius. Santout a re ez eo ar skrid evel an harp-natur d'ar prezeg hag e c'hell ar visionerien vrezonek beza sikouret en o labour santel gant skridoù mad e brezoneg.

(Da heuilh).

EUR GENTEL VAT

War *Dihunamb*, kelouen vizek hon mignoned vat Herrieu ha Mellac, eo e kavomp ar gentel-ze. « Bet ouu, eme Herrieu, e Bro-Gerand e lec'h e veze komzet c'hoaz brezoneg setu tregont vloaz. Breman n'eus nemet eun hanter-kant den koz bennak hag a hell her c'homz. Piou a zo kiriek da kement-se ? » Ha setu ar respont a reas eur vaouez d'ho mignoned : « Gwechall, en amzer va vaouankiz, an holl a gomze brezoneg ; mes, pa zeuas ar skolioù giz nevez, ar vistri hag ar mestrezed a zo deat da lavaret d'eomp paouez da gomz brezoneg d'hor bugale, d'ezo da c'hallout o zrei war ar galleg aesoc'h a ze ; ha selaouet hon

MOUSTRERIG

Gwelet ez eus er pennad kenta penós Yann ar C'holvez, eat da loja e milin Fanch ar Berr, ar sorsere, a oa bet darbet d'ezan beza mouget gant Moustrerig, hag e komz evelen:

(Pennad diwezan).

Sonjal a ris neuz gervel tud, mes marteze ne rafont nemet c'hoarzin d'in ha va gwapaat e leac'h va zikour... Hag ouспен, pa deus da zonjal mat, daoust ha n'eo ket ar miliner marteze e-unan eo oa oc'h ober an taol farserez-ze d'in, o klask va moug dre e zorserez? Gant ar zonj-se em penn e tenis da greua evel eur bern deilhou... hag e teuas da zonj d'in eus ar pezh a gonted war-benn ar miliner, rak gouzout a rean mat n'oa aneval abefbet er gwele kloz, ken piz em oa furchet hag asfurchet kement leac'h oa ennan.

Petra d'ober? En em lakaat da gonsket adarre, na petra 'ta! Mes evelkent n'oa ket dizoursi na dinec'h, kalz a vanke d'in zoken...

Allo! mat! setu hen asdeut, kerent ha m'am eus serret va daoulagad.

— « En dro-man vat, eme, e lezin anezan da zont tre betek va gouzoug, forz ha pa oufen beza mouget! »

Ploup! eman tapet! a zonjis. Tapet a-walc'h a lavaran-me zur! Al c'hounif donv a yoa nijet kwit adarre evel eul luc'heden, ha ne gaven roud ebet anezan.

Ma krenen araok, bremen e ris gwasoc'h c'hoaz! Nan, mar ebet mui! ar miliner eo a c'hoarie an droiuz-se d'in gant ar zorserez, rak asa, daonet, n'oa na raz, na kaz, na seurt ebet er gwele kloz, ken furchet ha difurchet em oa anezan.

Em brasa kaoud aon ec'h en em erbedis neuze ouz Doue, ar Werc'hez, an oll Zent ha Santezad eus ar Baradoz... hag e liviris n'ousped *De profundis* — ar pezh n'em oa ket great pell amzer a oa — evit kement ene maro a c'helle beza er boan, evit ma tenjant d'am zikour da denna diwarnoun sorserez ar miliner. Hag araok kousket e ris eur « sin ar groaz » gant kalz a feiz, ar pezh em oa ankounac'heat ober abarz d'om gwele.

Ar pezh-rest eus an noz, -netra na deus d'am egazi. Mes avat kerent ha goulou deiz e hastis gwiska va dilhad, ha mont er-mez eus an ti, rak santout a rean atao e oa ar sorserez o poueza war va diousoaz.

— « Da beleac'h ez it, Yan? » a hopas Fanch Ar Berr p'edon o tivorailli an nor.

— « Kre diaoul daonet, a zonjis, 'm eus aon out souezet abalamour m'emaon c'hoaz e buez, hag ez pens c'hoant va zapout a nevez... »

— « Asa, Fanch, eme ar wreg, serr da c'hinou. Anat d'it, Yan a zo savet gantan c'hoant mont war veaz. »

Ne jomis ket da c'hedal hirroc'h, ha me en hent warzu ar Roc'h-Toul:

Er Roc'h ez oa o chom eur vaouez koz, Mona, eur sorserez eus ar penn, eur sorserez dreist ha ne oa ket drouk tam ebet. Er c'houllet gant an holl e oa lakeat eur vaouez eus ar gwella.

Hervez ar brud e teune an diehanz diwar an tieg-man-n-tieg hag a varve e holl loened gant a bep seurt klevejou, hag e tenne c'hoaz ar sorserez diwar eun all hag a oa abaoe an dizeur ouz e zeulio.

He gouzigez vras a oa anat d'an holl, ha den n'en dije karet beza fall ganti, rak gouest e vije ive d'ober droug ma karfe, daoust n'he doa great nemet vad betek neuze.

Etrezek Mona eo em oa sonjet mont evit gouzout ha petra eo oa bet war va vro hed an noz. Alies a-walc'h em oa bet mallozet kent Mona ar Sorserez abalamour m'he doa bet lavaret d'in ez oa Miliner Ar Beler eur sorser fall, eus ar falla a c'helled kaout. Mes breman e kaven graz mont da c'houllet kuzul outi p'edon en dizeur.

Nevez-zavet e oa c'hoaz diwar he c'holc'hed pa zigonezis an ti, hag elo o tibikouza he daoulagad.

— « Doue r'ho pennigo, tintu Mona » a zraillhis oc'h antreal en ti.

— « Doue ra vo ganes, va mabig, a respontas ar wrac'h, ha ra daolo evez war gement kammed a ri. »

— « Da c'houllet kuzul ganeoc'h on dent, » emeve eun tammig franket warnoun, rak — heu anez a rankan — eun tam lent e oan o ligouezout en ti, pe el lochen da vihana, pa livirin gwir, rak eun tam toul dindan soul n'oa ken en faout ar Roc'h-Toul.

— « Dijuniomp da gerta, ha goude vo gwelet. » Va delc'her a reas ganti da zebri va dijuni: ha tre ma kemmeske ar yod silet er chaodouron war an tan, me a zanevelle d'ez ar pezh a oa digouezet ganen epad an noz hep ankounac'haat eun disterra.

Dijuni a oe debret gant lez boubouilh ha gwedennek toueziet. Mat a-walc'h e kavis keustereun an hini goz, rak eur flipad hent em oa great da zont betek enni, ha ze en doa lemmet va dent d'in.

An hini goz a zistalias goude eus dijuni. Kemeret a rea kement ha kement he amzer ma teuen da inoui. Abarz ar fin evelate e welis anezi o vont da beurwiska he dilhad evit lidou ar zorserez — rak dilhad ispisial he doa evit se. — War he fenn eur boned gwen-kann a c'holoe he zal ha staget dindan he helgez gant eul lasig tano. Eur mouchoer a zaou pe dri liou war he diousoaz, gwenn araok ha du adreuv. Eun tavancher penseliet, gant eur brendren vras a zave demost betek he gronc'h. Eul lunedou kraset war beg he fri. Hag evit echui eur re breched hag ear vaz « majik » etre he daouarn. Setu aze he gwiskamant lid, gwiskamant ha na veze ganti e nep leac'h, paz zoken en oferen — ha koulskoude Doue oar pegen aketus e oa Mona da oferen-bred ar barrez.

Truilhennet evelse ec'h azezas war he zrebeg. — « Tostait aman breman, va mab, ha dizo-loit d'in ho peultrin ma welin... »

Ar pezh a ris war ar ger! Hag e koumansas neuze, gant he breched en eun dorh hag he baz prizius en egile, ar sorserez da evesaat ouz va feultrin:

— « Ya, va mab, eun aneval a zo bet war he tro en noz-man... e roudou a weler war ho kroc'h... hag eun tammig muioc'h en dije ho mouget, rak tost betek ho kouzoug eo bet... »

D'ar geriou-se n'hellis ket miret d'ober eur skrijaden... ha leac'h e oa a gav d'in.

— « Ya, hag an aneval-se, eme ar zorserez o kendalc'h gant he oremuz, eo Moustrerig digaset d'ho moustra gant Fanch Ar Berr, sorsere milin Ar Beler... »

— « Douetanz bras am oa! » a liviris neuze.

— « Ya, Fanch a zo eur sorser eus ar falla, ne dalv ket ar gorden d'e grouga. Klasket en deus ober noaz ouzoun-me ive alies a-walc'h, mes va zorserez-me a vez ato treac'h d'e hini... »

Neuze e c'houlennis ouz Mona ha n'em oa mui ezom da gaout aon rak Moustrerig.

— « Eo, ha mouget e vlot gantan zoken, ma ne lakit evez, rak ar miliner a zo droug ennan o veza manket warnoc'h e daol kenta, hag eme o pourchas gwasoc'h d'eoec'h abeunt emberr... mes me a ouezo miret outan da noazout ouzoc'h. »

— « Ha petra d'ober neuze? » a sklokis, liou ar maro war va dremm.

— « Setu aman » eme Vona, hag ez eas d'eur prezh e traou an ti.

Eun tam poell du gant eur zac'hig outan a deuas ganti d'am c'haout.

— « Lakit ar skapular-man — rak heman a zo eur skapular bet benniget gant an aotrou 'n Eskob — en dro d'ho kouzoug, gant ar zac'hig a zo stag outan, ha neuze e c'hellot beza dizoursi. Keit ha ma tougot ar zac'hig-se war ho kerc'heo, al louzeier a bep seurt a zo kuzet ennan — ha gwriet mat warno ganen me va unan — a bellaio an diaoul diouzoc'h — rak Moustrerig a zo diaoul, ententij mat va bugel. »

Difrak ar zorserez koz e lakis dustu ar zac'hig endro d'am c'herc'hen, ha goude beza he zrugarekaet start kemeris penn an hent da vont da vilin ar Beler, abalamour da gerc'hat di va bihviou, mes ne jomis ket avad, daoust d'ar c'hoant en doa ar miliner, da echui va labour. Abaoe n'eo ket bet lost d'in lakaat va zreid e ti ar sorser diaoulek-se hag a glaskas va laza gant e Voustrerig. »

Yan Ar C'holvez en doa echnet da goms hag a c'hortennas e goro-butan en e c'hodel.

Goude eur pennad peoc'h, eur mousig bihan a zavas e vouez skiltr:

— « Ha sac'hig ar sorserez koz, petra hoc'h eus great anezan, tonon Yannig? »

— « Hat va filhor, gant kalz a resped hag a zevosion e tougan anezan bepred. »

Ha war ze, Yan Ar C'holvez a zigoras war e vruched evit diskwez d'omp gant kalz evez eur skapular koz ha stag outan eur zac'hig lian kar-gel a... bilhou, a wiad kevnid hag a laou-dar!...
Marvailher Kerneleon.

Trugare d'hon mignon ar Marvailher evit e varvailh ken koant, daoust d'ezan ma rayo eun tammig spout, 'm eus aon, d'eul lennerez pe lennerez bennak. An traou noz a vez spontas bepred! Koulskoude an diaoul, hag a zo eur potr fin anezan, evit tapout an dud, a chanj gwech pe wech doare e rouejou, ha bremen, a drugare Doue, ne glever ket hano nemeur eus a zorserez; eus ar ficherez, eus ar c'hinklerez, ne lavaran ket! Ar ficherez setu aze ar roud ma ra an diaoul ar maia impli anezi, hirio an deiz, evit tapout an dud yaouank! N'eus fors a he zoare e vije ardou Paul Goz, diskomp dre skouer Yann ar C'holvez hon diouall razo dre ar beden hag ar vuez kristen. Kerent ma 'n devoa sonjet Yann sevel e galon war-ze Doue, e tec'has Moustrerig kwit. Ar beden-ze graet a greis kalon e oe an nerz a ziar-benas, e gwirionez, ardou ar Miliner, ha n'e ket lidou Mona goz an hini e oe.

GLIZIN

Ton : Ma dousig koant.

Da Bipi Herve Zan.

Glizin oa eur potr yaouank a vro Dreger.
Meurbet karet
Gant e vam gristen hag e dad labourer,
Ha mignonned;
Warna da beh mare ar zellou darnije;
'Vel an evnig.
En liorzou Breiz-Izel hen a gane,
Kaerat eostig! (Diou wech).

An hekleo eus e vouez drant, da bep minlin,
Am dihune;
Souezet gant e vuzig, e sonje d'in
'Kreiz ma huuvre,
Klevet elez ar baradoz o kanson,
Tonio tener;
E vouez henvel ouz an delen gaeran
Gane seder. (Diou wech).

D'ar zulio vije gwelet 'vel ar vluen,
Eu kreiz ar prad,
En mesk an oll 'vije kavet o souten,
An dud en oad;
Penn-da-benn, d'an dever merket, aketus
Hep 'n em fazia,
E rente e genvroid evurus,
Eu eur gana. (Diou wech).

Ar bar-awel, o tremen dre Vreiz-Izel,
'N eus diskaret
An eostig bihan diwar e vranc uhel,
Huel-bignet;
Kwitat 'neus hon Bro evit mont da Bariz,
'N despet d'e dud,
Et eo evit biken d'ar ger ken iskiz,
'Lech 'n eus gwall-vrud. (Diou wech).

Ne distroio biken d'hon bro garet,
Daoust d'al lizer
He deus d'ezan he dousig koant bet kaset,
'Vit dont d'ar ger.
Bremen lar foi d'e yaouankiz, d'e gened,
D'he bravante,
Rak e galon 'zo gant al loen goneet,
Piou na ouelle? (Diou wech).

Ar c'hlenvejou, ar rann galon, ar glac'har
Deu d'hen tagan;
Gwasoc'h 'zo, e goustan, me hen lavar,
Deu d'hen gwaskan.
Skrivan ra d'e vam vat eun nebeut girou,
Trist da glevet,
E drubuilh, e boan spered, e oberou,
Oll int merket. (Diou wech).

Mam dous ha mam dener, deut d'am fardoni,
Glizin ho ped.

Da vezan kwitaet ma Bro a dudi,
En ho tresp;
Poket d'am zad evidoun ha d'am dousig,
'Zo trubuilhet,
Souden e tiskennin 'n em be reuzendik,
Hep ho kwelet. (Diou wech).

Me ho ped, war benerez ma be merket
Ar c'homjou-man :
Ar potrig kriz a galon ha divroet
A gousk aman,
Hag a ro ali d'an oll Vretoned far
Da chom 'n o Bro,
Rak eus ar broio pell ne voint ket asur
Da zont endro. (Diou wech).

TRAOU-YEODI.

AR C'HRISTEN

E Skol ar Skritur-Zakr hag ar skiant-vad diwarbenn Sakramant an Aoter

Al lezen gristen a zesk d'eomp tui seurt traou : traou a rankomp da gredi, traou a rankomp da ober ha traou hag hor sikour d'en em zantelaat. An traou hor sikour d'en em zantelaat eo ar beden hag ar zakramanchou. Ar c'haera eus an holl zakramanchou eo ar Zakramant (Meulet ra vezo) eus an aoter. Ennan e kavomp o chom noz deiz, betek fin an amzeriou, Jezuz, an hevelep Jezuz a yoa gwechall o veva war an douar e bro Judea hag a zo brema en e c'hloar en envou. Beza ema ennan leun a vuez, gant e gorf, e wad, e ene, e zouelez (divinité). N'eus ken kem nemet e wele an dud anezan gwechall gant daoulagad ar c'horf ha brema n'her gwelont nemet gant daoulagad ar Feiz.

Gant piou, pedavare ha penós eo bet savet ar Zakramant-ma? Jezuz o welet o tostaat an eur da gwitaet an douar, mes o fellout d'ezan chom gant e ziskibien hag ar gristenien all war o lerc'h betek fin ar bed, a reas kement-ma er goan diweza a reas gant e Ebestel d'erc'hent e basiou, e varo war ar goaz : Kemer a reas bara hag, o veza e venniget, her rannas hag her roas d'e ebestel en eur lavaret : « An dra-ma eo va c'horf. » Gondeze, o veza kemeret gwin en eur c'halir, her bennigas ive hag e teuas da lavaret d'ezo : « Evit eur c'halir-ma holl, rak an dra-ma eo ma gwad, gwad ar Geyredigez nevez, hag a vezo skuilhet evit aleiz a dud, d'ezo da gaout ar pardon eus o fec'hejou. (Sant Vazé, xxvi, 28) ; grit kement-ma em hano. (Sant Luk, xxii, 19). »

Piou en deus ar galloud da gensakri, da gemm ar bara hag ar gwin e korf, gwad, ene ha douelez hor Zalver Jezuz-Krist? Eun artikl a feiz eo n'eus nemet an eskibien, ar veleien hag o defe ar galloud da gensakri. N'eo nemet d'an ebestel ha d'ar re a zalc'hje o lec'h en deus roet Jezuz ar galloud-se p'an deus lavaret : « Hoc facite in meam commemorationem. » (Sant Luk, xxii, 19).

An Iliz Santel Katolik he deus roet da glevet dre ar pevare sened a Latran : « Hoc itaque sacramentum nemo potest conficere, nisi sacerdos qui rite fuerit ordinatus », n'hell ober ar Zakramant-se nemet en hini en deus resevet sakramant an Urz evel m'eo dileet. Hag ar sened a Drant (Sess. xiii, artikl 2) a lavar : « Si quis dixerit illis verbis : Hoc facite in meam commemorationem, Christum non instituisse apostolos sacerdotes, aut non ordinasse, ut ipsi alii que sacerdotes offerent corpus et sanguinem suum, anathema sit! » Neb piou bennak a nac'ho 'n eus Jezuz-Krist dre ar c'homjou : « Grit kement-ma em hano, great an ebestel beleian, pe roet d'ezo sakramant an urz evit ma kinigent, i hag ar veleien, e sakrifiz e gorf hag e wad, ra vezo eskommunget! »

Ar Brotestanted a nac'h sakramant an Urz, ha pa ne rafent ket, penós e raint beleien pa n'o deus ket a eskob, a veleien hervez lezen an Iliz Santel Katolik? Ar ministr protestant n'hell ket eta kensakri, lakat sakramant an aoter da veza. Evel-se e nac'hont ive ar zakramant (Meulet ra vezo!) eus an aoter. Evit digarezi, o deus kredet lavaret : Ar bara a Sakramant an aoter, n'eo ket korf Jezuz ez eo; n'eo nemet eur skened, eur patrom bennak anezan hepken. Perak ne lavaront-i ket dioc'htu,

kement hag ober, n'eo sakramant an aoter netra tout? Petra glaskont-i, e gwirionez, gant o skenedennon, o fatromou? Ar peza a dle beza gwir eo n'eo ket dishenvel an tam bara a zebr' ar pagan d'e bred diouz an tam bara a vez gant ar visitred protestant pa reont o fred-lid, ar « goan » evel ma her galvont.

Digoromp, lennerien, levr ar Wirionez, an Aviel 'vit gwelet e pe leac'h ema ar Wirionez war ar poent-ma.

Diouz ma verk an Aviel, Jezuz a reas daou dra. *Da genta* : lavaret a reas e roje d'an dud e gorf da zibri hag e wad da eva; *d'an eil* : d'erc'hel a reas d'e gomz ha roi a reas d'e ebestel, er goan diveza, e gorf dindan spesou ar bara hag e wad dindan spesou ar gwin.

(Da heuilh).

KATOLI.

WAR AN UHEL!

Piou ac'hanoc'h, Breiziz, Keltied a wad hag a [ouenn,
Ganet en tier plouz, maget gant laez Breizad,
Ne blij ket d'an sevel, du-hont betek kribenn
Ar menez rouz ha rust a zisheol ti e dad?

Eno harp ouz eur roc'h, diskwizet eur pennad,
Ho treid mesk ar brug flour hag al lann koz [melen,

Eno, dirak ho pro, 'teny ho tal da lorc'hât,
Ho tremm a zigoro, ha c'houi zavo ho penn.

Neuze ouz ar menez war askel an avel,
Leuskit da nijal a-us da Vreiz-Izel,
Ho kalon zec'hedik bepred o klask frankât.

Da zistro an avel, flour, stank, hag o kanaan,
C'houi zanto ho pruched o virvi da rannan...
War an Uhel, Breiziz, ec'h adtomfet ho kwad.

ROCHLANN.

FENTIGELLOU

Ar Vamm. — Yannig, kerzet e teus war droad an aotrou koz-se; ha goulnnet e teus pardon?

Yannig. — Ya, mammig, hag an aotrou koz, o welet e oan eun bugel savet mat, en deus roet d'in eur gwennegig da gaout madigou.

Ar Vamm. — Ha Petra 'teus graet neuze?

Yannig. — Feta, kerzet em eus buhan war e droad all da gaout eur gwennegig c'hoaz! Mes n'em eus ket bet!

Jakez Vrasoni a zo aet da binvidik ha nevedbrenet gantan eur c'har-dre-dân. Keja a ra war an hent bras gant e vignon koz, Pipi Drent, en e goz garigel stlejet gant eun azen.

— « Ac'hanta, Pipi Drent, eme Vrasoni, petra a lerez eus va « oto »? N'e ket henvel ouz da goz garigel? N'e ket 'ta? »

— « O, eme Pipi Drent, n'eus ket kement-se a zishevelidigez etrezo. Em hini an azen a gerz a-raok hag ez hini eman... ebarz! »

KELEIER EUS AR BED-OLL

Eul laeroni dreist-ordinal. — E ker Ischl, en Aotrich, e oa bet lidou evit diazeza maen-kenta eur c'hlanvdi (pe hospital). Evel m'eman ar c'hliz, e oa bet kleuzet er maen-diazez eun toull ha siellet ennan eur paper-parch sinet gant an impalaer, hag ive eur vedalen aour a dalvoudegez vras. E kreiz noz e teuas laeron da deri ar maen ha da ziframma parch ha medalen. 1.000 lur a c'hops a vo evit an nep a dapo ane.

Brezel ar Marok. — Ar brezel, savet entre an daou roue pe sultan eus ar vro-ze, a zo aet da fall evit Abdul-Aziz, an hini anezo a oa skoazellet gant ar Fransizien.

Da heul, setu an Arabed o figouezout betek war harzon an Aljeri. Aon 'zo ne vo gwall-grogadoun hepdale.

War-zu ahel-lec'h an douar. — An douar a zo doare evel eur voul evel ouzoc'h hag, o vezan ma tro evel eur gornigel dirak an heul e teu, peb eil tro, war an daou hanter anezi an deiz hag an noz. Eman o trei evel-se evel pa vije war ahel, evel eur rod, ha meur a hini en deus klasket mont betek an daou ahel-lec'h eus an douar. Gwaz a ze, dre ma tostaer outo e teu an temps-amzer da yenaat kement ken n'eus ken dre-oll nemet erc'h ha skorn. Eur beajour brudet hanvet Charcot en deus lakaet ober e Sant-Malo eul lestr *Pourquoi pas?* da laret eo : Perak nan? e hano, da dizout an ahel-lec'h. Kerzet a ra dre lian ha dre dan. Aet eo kwit evit e veaj hirr ar zizun dremenet.

Klaved an aotrou Clemenceau. — An aotrou Clemenceau, a oa aet da Garlsbad da gemeret douriou-melar brudet ar vro-ze, a zo kouezet gwall-glanv. Gwelloc'h kelou a zo eus e yec'hed koulskoude hag e sonj eman da zistrei da Bariz hepdale.

An dispac'h e Bro-Berz. — Bro-Berz eo ar vro-ze eus ar c'huz-heol e oa genidik anezi ar rouane a zeuas da azeuli hor Zalver. Abaoe an auzeriou pella e oa bet renet gant rouane. Setu savet an dispac'h hag e talc'h da vont war raok, daoust d'ar roue, (ar Cha a reer anezan) da skei gant an dispac'herien gant kalz a grizder.

Ha peoc'h a vezo? — Sellou an holl a zo troet war-zu ar Marok, rak aon a zo ne vije impalaer an Alamagn oc'h hisa die zindan Arabiz ouz ar Fransizien. Setu eman an impalaer o paonez ober eun diskleriadur a beoc'h. En eur brezegenn graet gantan e Strasbourg en deus lavaret uhel ne c'hoantae nemet ar peoc'h.

Ha gwelet a refomp ni nijerien e Breiz? — Evel ouzoc'h, dre hir-glask, tud ijinus o deus kavadenet eur sort mekanig hanvet nijerez, e c'heller gantan pignat ha nijal en aer evel an evned. Ne glever ken komz hirio nemet eus unan eus an nijerien-ze, eun Amerikad hanvet Wright, a labour gant e vekanig tost d'ar ger ar Maus. O veza n'eman ket ledan a-walc'h kompezenour ar Maus, Sant-Briegig a c'houlen ma tenu war aochou Breiz da ober e daoulin-esa. N'eo ket al lec'h a vankfe d'ezan war trez Seson e Sant-Brieg, pe war hini Lok-Mikel.

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

BREST. — Eur zoudard o koueza e touffe ar c'hastel. — Eur zoudard, hanvet Gwagen, a zo kouezet dre zaryoud e touffe kazarn Rekouvrantz. Toret eo e zaon arzoarn d'ezan hag e seblant gwall-c'hloazet.

Eur zoudard torfetour. — Ar zizun dremenet diou itron a oe sailhet ganto e Trez-Hir gant eur zoudard. Gwall-gaset int bet o diou hag unan zoken taolet gant ar zoudard eus an torrot war ar bili eus eun uhelder a bemzek troatad ha tri-ugent. Ar zoudard a zo bet prizoniêt.

GWENED. — Eur marc'h-houarn da vont war an douar. — Eur pôte yaouank eus Gwened, an aotrou Gypsteau, mab da goumandant ar riboulerien (pompiers), en deus ijinet eur marc'h-houarn da redek war an douar. Graet en deus warnan eur valeaden war ar ster, dirak eun en-groez a dud diredet da welet.

GWIMAEAC. — Lazet gant eun dourner. — Edd gant an dourna war levr an aotrou Toker e Gwimaec. A greis-oll unan eus honennou an dourner a strakas hag eun tamm anezi, stapet en aer gant lans ar mekaouig, a dizas Nikolos Etien a oe lazet war an taol.

deus snezo, siomp! « Kement all a arrou ganeomp, ma lezomp d'en em droada en hon louez ar gwall-voezant-se da drei ar vugale war ar galleg evit lega da goz vistri ha mestrezed-skol a zo.

Tadou ha mammou Breiz, bet aketus da gomz brezoneg d'ho vugale, ez bihanik, evit ma vo gwir bepred ar c'hrenlavari : *Tra ma vo mor e vo brezoneg!*

EUR ZELL-TRO

Ar zun-all e prometis d'ac'h, lennerien ger, eur pennad diwar-benn ar mestri-skola-vreman. Siouaz, an amzer 'zo bet herr; red eo d'in eta lezel ze evit ar zun, ha komz d'ac'h eus treo-all.

Ar chanz fall a zo kouezet war hon listri brezel. Hepdale, ma talc'h ar gwall-chanz, hon faour kez martoloded a gollo holl o bne. E un drue eo! Aboue eun toullad blaveziou ne weler nemet darvoud war darvoud maro war maro...

Ha bep tro, bugale Breiz a renk skuilh o gwad e kreiz eun amzer a beuc'h. An deiou-all, war bourz al lestr *Couronne*, eur c'hanol a darze. An hevelep darvoud a zo bet arrou ter gwech war al lestr-man eun daou vla zo...

A belec'h e ten kement-man? Red eo kredi penos e zo marc'hadurez fall gant ar Gouarnamant. Ar boullr pe danve ar boulejou a zo hep talvoudegez, rak er rouanteleziou-all, ne weler ket ar seurt darvoudou, ha koulskoude int o deus kanoliou evel-domp.

Elec'h drailha beleiet, ha surezedez, hon Gouarnamant 'rafe gwel mësä ervad mic'herourien ar porziou-mor ha rei gwelloc'h benvidioù d'ho martoloded. Neuze ne welfemp ket an daerou o ruilhal ken alies en hon siegeziou na bugale hon Bro o vervel ken stauk en amzer a beuc'h.

Ar bugel d'ar Gouarnamant! Setu ar pezh a garfe an aotro T..... a Loudeak. An aotro-man, bet savet mat en kloedri Plougerneve, a laras ar zun-all er c'huzuilh bras penos an tadou hag ar mammou o devoa deveriou en keuver o bugale, mes n'o doa gwir (droel) abed warne. Ar bugel, emezan, a zo d'ar Gouarnamant adalek m'eo gouest da vont d'ar skol!

Red eo, en gwirione, kavout hardiegezh T....., abenn kredout lavaret sotoniou evelse...

— C'houi, tadou ha mammou, a zavo ho pugel, a vevo hag a wisko anezan... Mes, pet sonj, ar bugel-ze n'eo ket d'ac'h. Evel ma ve lemmet al loue digant ar vioc'h evit hen kas d'ar c'higer pe d'ar mager, evelse e teuy pötred ar Gouarnamant: ar mestri-skol, ar maer, an emzeller (inspecteur), ar c'hentan lakez ru, da ziframma diganac'h ho krouadurige evit hen rei da Gomb, da Briand, da Glemenceau pe d'eur franmason-all bennak... C'houi n'hallfet na klemm, na termal, na gouela, na lavaret grik, petramant, kerkent, ec'h efet d'an toull?...

Mar ne vije ar sonj-man pell zo en penn ar Franmasoned, e oa peadra da c'hoarzin gant T..... Mes dirak komzou ken fall, ar gwad a verv er gwazion hag ar gouarnar a groz eo: kalon pep kristen...

— Deus 'la, T....., deus 'la da ziframma he bugel digant eur vam vreizad evit hen rei d'ar Gouarnamant!... Gwelet 'ran ar vam-ze war an oaled o tommä he bugel, ha te o tout e barz an ti... A-boan e teus laret da geverdi, ma welan daoulagad ar vam o strikhal tan goude bezan teulet eur zell war hec'h elig... Sevel a ra hag, he nerz kresket dek gwech gant ar garante, hi a difenn he bugel evel eul leonez, ha ma 'z eo red, e ro an daken diwean eus he gwad evit he c'hrouadur...

Ah! paourkezh T....., an de az poa laret ar c'homzou-ze, az pije groet mad-sonjal eun tam en ez mam, er vam-ze he deus roet d'it eur gelen-

nadurez ken kristen, hag e ve droug ennout!

Laket az pije anei da ruzia gant ar vez!... Foei!

Hon C'huzuilherien bras na reont ket nemeur a wad fall. Elec'h c'hoantät lemmet ar vugale digant o zud evel T..... unan aneä a gäve de-reatoch furchal godellou an dud.

Ar farsier-man a c'houlenas ar zun-all ma vije paeet *dek lur bemde (!)* ar C'huzuilherien vras... Warlerc'h an deputeed eo kroget en hon C'huzuilherien klenved stagus an archant.

Bezant paeet a *zek lur bemde!* Kavout dek lur bemde evit mont da Zant-Briek eun nebeut devezion, alies da greski trujou war an departamant pe ar parouziou... Ze n'eo ket fall!

Jesus, ma Doue! Na me garfe bezan kannad (depute) evit *5 mil skod ar bla*, kuzuilher bras evit dek lur bemde ha Prezidant ar Republik evit 700.000 lur!... Neuze, da vihanan, me vefe eun aotro!... Me ive a rafe gwap eus ar bobl hag a larfe d'ezan p'en em gavfe ar c'houiz da baea truchou: Allo, pötred, paeet a galon vad, rak, zac'h-an-dien! mont mad ra ar bed!

... Mes, mar paouezfe Fanch Kouer da baea, neuze, 'vat, e ve didonet eun nebeudig loueou, han?

A. DEETORY.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deut da vale en Breiz

d'he c'hamaradez en Paris

(KENDALC'H)

Kergoz, 1^a viz Gwengolo 1908.

Lusi gez.

Chanhamant bro a zo adarre ganin. Ne badan ket pell en hevelep lec'h, ha koulskoude, en Kerroziou me oa ken brao ken a renkis gouelan en eur gwitäl. Sonj d'it, eur bagad 'vel ma oa eun, kement a vesk, kement a vue, holl ken sart, ken lirin! Eur yec'hed eo bevan en eun ti evelse. Biskoaz netra n'am eus gwelet etre an dud-se: « 'Vel vo bolante Doue 'vo gret! » eme ma euntr koz; ha moereb koz a responte: « 'Velse zur, avat, Gwilhaou, hennez a oar ar pezh hon deus ezom! » Ha n'eus forz petra c'hoarveze, ne vije na klem, na jolori, gir gwech ebet uheloc'h 'vit egile.

Aman breman, en Kergoz, n'e ket memez tra. Tud vat, a dra zur, eo ma c'henderv Jozon hag e wreg, neve dimeet; mes santout a rer gante 'zo divleuniet en o liorz eur rozen hag a dol bepred c'houez vat en liorz Kerroziou. Mes, me 'n em ra ervat dre holl aman; rak tolet 'm eus plä d'eun dra n'eus forz pelec'h ec'h arruan, gwelloc'h c'houez a zantan bopred gant ar vro-man 'vit gant Paris.

Koulskoude, en Kergoz, 'm eus santet ive ar c'houez-all-ze anaveet mat ganin. Aman 'zo eur breur-kaer d'am c'henitervez, o tremu ive eur pemzek devez amzer gaer. Pell eo bet ermeaz a Vreiz o klask e vad; ar paour kez pötred, avat, 'n eus kavet kentoc'h e fall. Archant an eus serret, diouz klevet anean, mes e spered, da vihanan, a zo bet troet d'eun war an tu gin. Heman vije mat da baran Matild.

D'ar zadorn e oan digouezet aman; an de warlerc'h d'ar beure, e pedis anean da zont ganin d'an oferen-veure, eun hanter leo eus Kergoz.

— D'an oferen? emean. Muioch a vad a rafe d'in eun dro besketa.

— E-herr c'houi 'yei da besketa!

— Ma fe, emean, 'vit p'eo gwir ec'h on deut c'hoaz da « Vretagn » zod, greomp 'ta 'vel gwec'hall-goz. Aman n'hail ket an dud ober 'vel el lec'h-all. Dibri krampeoz ha yod, komz brezoneg, mont d'an oferen, ze 'zo d'e hag a vo. Deomp 'ta d'an oferen, n'e ket ar boan d'in dislaret ar re-all war an dra-ze, p'eo gwir 'm eus 'n em laketa da

dibri yod ha da gomz brezoneg.

— C'houi oar brezoneg? emean.

— Ya da, emean, brezoneg a walc'h 'vit këlo ar pezh am eus gret gant. Pet sur, mar n'am ije goulet nemet dibri yod, komz brezoneg ha mout d'an oferen, me ne oan ket breman perc'hent kant skod leve.

— Bepred, pa deuet d'ho pro, n'e ket fall d'ac'h bean miret ho brezoneg. Me garje gout eul lod eus ar pezh a ouzoeh.

— Ba, eme ma c'henderv Jozon, heman oa et en goueni, mes ni a dioueo anean kent ma tizroio da Bariz. Setu hen breman o vont d'an oferen, ha ne oa ket bet trizek vla so! — Nikolas, (hano perc'hent ar c'hant skod leve) a oa et aök 'n eur ober eur c'hruz d'e ziouskoa.

Setu ni d'ar bourk ha d'an iliz.

Aboue ma oun arrou en Breiz-Izel, am eus kazi dilezet an oferen-bred. N'ouzout ket perak? Abalamour d'an dra-man. En oferen-veure e ve kanet kantikou brezonek hag en oferen-bred ne ve ket. Na pa larfen d'it ne gredfes pegement e plij d'in ar c'hantikou brezonek! Biskoaz hini n'am oa klevet, rak pa oan deut d'ar vro ar wech-all, oan chomet 'n eur barouz ha ne vije ket kanet enni a gantikou brezonek. Biskoaz, a dra zur, n'am oa klevet-me kanaan nag *Els eus ar baradoz*, na *Jezuz peged bras eo*, na *O halon Zakr*, na *gourc'hemennou Doue*, ha koulskoude, — tra souezus — 'm eus anaoudegez eus an toniou-ze. Pa veint kanet, e seblant d'in klevet monezion ha n'am e ket klevet 'houe pell pell 'zo, moueziou hag a ra d'am c'halon tridal seurt n'he deus gret biskoaz. A drugare Doue, er barouz-man 'zo eur zakrist hag a gan kaer dispar an toniou brezonek; ar merc'hed o deus moueziou eus an ne. N'e ket eun hanter-eur e karfen e padfe an oferen; mes peder gwech eun hanter-eur, nemet e vefe kanet penda-ben kantikou brezonek. Merc'h kez, sonj a teus an de ma oamp bet gant da dad en Opera o klevet *Mireille?*... *Mireille* n'eo seurt ebet d'am c'hantikou brezonek. Biskoaz tön na zon n'eo deus skoet ac'hanon betek en goueled ma c'halon evel ma ra *Jezuz, peged bras e!* Eun tön koulskoude ha n'eus man anean! N'ouzout ket pelec'h eo bet ar Vretoned o klask an toniou-ze. Peadra 'zo 'vit ober d'in chom en Breiz... Ya, zur mat vese, ne distagfen ken ac'han, mar kavfen (d'it, en eul lizer, ec'h hallan lavaret kement-man) mar kavfen eur pötred yaouank seurt gant ma c'henterv Fanchig, eur Breton c'houek ha yac'h-pesk, da gemer da Dereza. Ar Vretoned n'o deus nemet eur gwall-si, everien int. Koulskoude Fauchig n'e ket ever. (Tol plä mat e kontfes an treo-man da zen ebet!!!...)

... Arsa, kollet am eus ar penn eus ma c'huden. Pelec'h oan arrou, lar d'in? A greis ma oferen 'm eus kollet ma fater. Dal ma 'n evoe respontet ar c'holist *Deo gratias* d'an Aveli diwean, ma c'hamarad Nikolas a dapas e dog hag ermeaz!

Eur c'hantig a oa c'hoaz, hag e chomis da chileo. Arrou ouñ zoken hag e teuan a-benn d'o c'hanan. Goude ec'h is ermeaz ive. Ouz toull an nor e oa Nikolas. Aman e ve laret *Nitiolass*, o pouezan kalz war *tio* hag eun tam war *tass* Hag hen gant eur zellou treut hag eun ér c'houvermouz hag o lavaret.

(Da heuilh).

E GWERZ: Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otrou CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otrou CLERC, kelennet Collège Notre-Dame, Guingamp.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULEN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant: F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUKANANCHOÙ

16 real ar bloaz evit *Breiz ha Bro-C'hall*.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar *Broto heltiek*.

KEVREDOEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EXHANNOU-KONVERZ

Ad Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer sez

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GEIZ.
Gant gallek eo deud ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.
FURNEZ AN GEIZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'h et,
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'h'ed!
MILIN.

ALI

*Ar zun-man hag ar zun a deu, eus ar zadorn
d'abarde, 11 eus ar miz, betek ar gwener, 18, e
vo gouelioù bras Kevredigez Breiz en Plougastel-
Daoulas. Komzet e vo ispisial eus ar brezoneg,
d'al lun ha d'ar gwener, 17 ha 18. An holl
Vretoned o deus c'hoant da vean loden 'barz al
labourioù 'vit ar brezoneg a vo mat d'e 'n em
gaout en Plougastel an daou de-ze, da rihanen.*

ALUZENNOU "BREURIEZ AR BREZONEG"

An otro Evans, rener-skol en Bro-
Gymri. 20 real.
An otro Cardinal, rener *Feiz ha Breiz*. 1 skoed.

An holl, ha betek hon mignonned a Vro-Gymri
a blij d'e *Breueriez ar Brezoneg* hag a gav d'e e
ra ar vad. Sikouront anei eta, en han' Doue! Ra
heuilho mui-ouz-mui a dud skouer an otro Evans.
unan eus ar pevar Gymro kalonik hon deus gwe-
let en Breiz neve so, ha, daoust d'e an da vean
pell, a oar asten e zorn dreist d'ar mor da ginnig
d'imp eun tam zikour. Bennoz Doue d'ean!

Trugare d'an otro Cardinal, rener *Feiz ha Breiz*.
Evel m'eo he gazetenn kar-tost da *Groaz ar Vre-
toned*, hen a ziskoue ive ne zell nemet eun dra,
nemet e vo krenv ar brezoneg koulz en Treger
'vel en Leon.

An otro Evans, gant e brof, a unan, dreist d'ar
mor, Breiz Tramor ha Breiz-Izel, hag an otro
Cardinal, dreist da harzou Leon ha Treger, a
unan ive hon diou vro, gant e zorn madelezus.

Roll Rakprenerien "Bleuniou Yaouankiz"

Dastumaden sonioù ha gwerzioù

gant AR YEODET

An otro 'n abad Cardinal, rener *Feiz
ha Breiz*. 1 levr.
An otro 'n abad Brient, kure Boulvriak. 1

AR MESTR-SKOL A VREMAN

An deioù-all e komzen aman eus ar mestr-skol
gwechall. Hirie e fell d'in lavaret eun nebeut
giriou diwar-benn an hini a vremen.

Eun nebeut giriou... Ezom a ve kentoc'h
d'ober eul levr ha c'hoaz ne vefe ket eul levr
bihan!

An tad hag ar vam a anve reiz kaerder hag
uhelder karg eur c'helenner. Er c'helenner e fi-
ziant o bugel, o c'hrouadur o gwad. Ine ar bugel-
ze, gwân ha dinerz, a c'hall bezan troet he distroet,
mérét evel eun tam toaz ha roet d'ezan ar plegiou
a garer. Ar c'helenner pe ar mestr-skol a gaso ar
c'hrouadur war an tu a garo, herve ma vo e-unan
mad pe fall, kristen pe dizoue.

Ar mestr-skol a vremen n'eo ket red laret petra
eo. Renet gant eur Gouarnamant dife, ar mestr-
skol a zo dizoue hag e blijadur eo rei dorn d'ar
Gouarnamant da digristeni ar Vro.

Ar Gouarnamant na digristena ket ar vro hep

gôt d'ezan; pell 'zo e klask an tu da ze. Dies eo
koulskoude dont abenn eus tud oajet ha pennek :
— « Tolomp hon fao, emezan, war ar vugale...
Evit se, serromp an holl skolioù kristen, ma
teuo an holl vugale d'hon re. En hon skolioù,
herve an urzioù roet d'hon mestrou-skol, herve
ar gelenndurez roet gant hon mestrou d'ar vu-
gale, ar vugale a vo d'imp en despet d'o zud...
Skol ar Gouarnamant a zo eur mekanig a zigemer
eur c'hrouadur kristen evit renti goude eun den
dizoue d'an tad ha d'ar vam glac'haret... »

Tam ha tam eo et ar fall war greski; tam ha
tam, harpet ha boutet gant ar Gouarnamant, ar
vistri-skol o deus kemeret troad. Hirie o labour
'zo ken gwaz, emaint arri ken pell, mar n'haller
ken serri an daoulagad, na stouvan an dioukouarn.
Serri an daoulagad stouvan an dioukouarn
e ve, nan hepken mankout d'ar wirione, noazout
ouz an tad hag ar vam, mes ive rei dorn d'e da
vuntri ar vro a-bez.

Hirie e saver en eur rum skolioù bugale ha n'o
deus na doujanz ouz Doue na karante ouz o zud.

A belec'h o defe doujanz ha karante? N'emaint
ket o klevet bemde nan eus Doue abed... O zud
'zo zod o kredi beleien... An den a dle bevan
herve e c'hoant hag e froudennoù, hep lezen na
mestr...!

N'eo ket hep digare eo kresket, en daouzek via,
an torfejou eus a 8 da 20 mil! N'eo ket hep di-
gare d'war gant bugel bet dirak al lez-varn e
teue 89 eus ar skolioù dizoue, eus skolioù ar
Gouarnamant!

Ah! pa lemmer doujanz Doue eus kalon ar
bugel, e lemmer ive doujanz ha karante an nesan.
Eur bugel dizoue a zo gwasoc'h pell evit eul
loer; lakât a ra e skiant, e anaoudegezh, e ziska-
durez d'ober ar fall.

Digoret ar c'hazetennoù hag e welfet warnê
bemde laeronsiou, torfejou, tanioù-gwall ha fal-
lentezioù a bep seurt. Perak? Entoue al loer
goue, an den dizoue a zo dichadennet.

Gwechall, a dra zur, e oa torfetourien, mes an
dorfetourien gwechall o dije an darnvuian ane
tremen ugent ha tregont via. Hirie an torfejou
heuzusan a zo groet gant bugale dek, daouzek,
pevarzek via!

Ha c'hoaz e larer d'imp e kresk an anaoudegezh
en touez an dud hag ec'h eomp war araok...
Spontus eo!

Kement-man a zigas da sonj d'in beza lennet
penôs Napoleon kentan, o karga an aotrou de Fon-
tanès eus diskadurez ha gelenndurez ar vugale,
o rei d'ezan renadur ar skolioù, a lavare: — « Red
vo, emezan, ober d'in skolerien hag a ouio di-
wealc'h bezan tud... An den n'hall bezan den
en diavez Doue... War betra e tiuzefet ar gelen-
ndurez, ma tilezet Doue? ... An den dizoue n'eo
ket eun den; an den-ze na ve ket gouarnet, hen-
nez a ve fuzuilhet! ... Ne fell ket d'in a dud
dizoue! Evit stummi tud, me lako Doue eus ma
zu ha neuze em bo tud! »

Komzou kaer, en gwirione, laret dreist-holl
goude dizurz, dizouelez ha kasoni an Dispac'h
vras (Révolution); komzou hag a dlefe bezan ive
garanet en kalon tud hon Gouarnamant... Mes,
allaz! Ar re-man na glaskont ket a dud; ar re-
man a glask lakat an den en renk al loened. Ne

vefont ket evurus ac'han ma vo tremenet an holl
Fransijen dre o skolioù dizoue...

Kement oa karet ar mestr-skol gwechall, ke-
ment eo dilezet an hini a vremen.

Ha penôs ne vefe ket?

Karg an den war an douar a zo eur c'halve-
digez (vocation). Evit bevan beleg, evit bezan
mestr-skol e fell bezan galvet. Hogen eur rum, an
darnvuian zoken eus hon mistri-skol a vremen
n'int ket muioc'h galvet d'ar garg-ze eget n'ou-me
d'ar garg a bab.

O galvedigez eo ar c'hoant da c'houit arc'hant,
da vezan aotrone. Ine ar bugel, e gelenndurez a
denio goude... Kreden an tad, karante ar vam a
vo bitellajou!

— « Paeet, emê, gant ar Gouarnamant, ni a
heuilho ar Gouarnamant!

« Ar Gouarnamant 'zo dizoue, ni a vo dizoue!

« Ar Gouarnamant ra brezel d'ar beleg, d'ar
Relijion, ni a rey brezel d'ar beleg, d'ar Relijion!

« Ar Gouarnamant a gar eur rum-tud hag a gaz
eur rum-all, ni a garo mignonned ar Gouarnamant
hag a gazo e enebourien! »

Evelse etnan en pep parouz, ar mestr-skol ene-
bour touet d'ar beleg. Laret 'rafe an den e ve
laket eno evit dispenn labour ar beleg. E bli-
jadur vo gwazt an oferen, tremen hep mont d'an
iliz (e spered 'zo re uhel evit-se!) dikrial kreden-
nou an dud ha prezek d'an holl kement tra a
zeblant enep d'ar Relijion.

Mar ne vije nemet ar skouer a ro en diavez e
di labour, ar mestr-skol a vije skanv. Siouaz!
pegwir e fell d'ezan chench penn d'ar bed, pegwir
e kred d'ezan eo galvet da groui eur bed neve war
dismatron an hini koz, en e glast eo en em ro
d'e a galon vad.

N'eus ket pell Emzeller bras (Inspecteur d'Aca-
démie) hon departamant a lare e tleje bezan skri-
vet war d'ar skolioù ar Gouarnamant: *Houman
'zo eur skol dizoue!* Me gav d'in o deus heuilhet
hon mistri komzou an aotrou-man.

Ped ha ped a vistri, a vestrezed, na akont ket
hon bugaligoù da ruzia dre er fent a reont gant
hon c'hredennoù! Ped ha ped na waout ket
lidou an iliz, gizioù fur ar bobl dirak skolerien
vihan, gwerch o c'halon ha dinam o ine!


Bezan em eus breman dirak ma daoulagad,
tennet gant diwar *Groaz Paris*, pemzek testeni
a gement-man, testenioù kutuilhet en pevar c'horn
ar Franz hag a dlefe bezan anvet gant an holl.

Daoust da ze, an tadou hag ar mammou n'hall-
lont en stum abed 'n em zevet eneb d'ar mestr-
skol, na difenn ine o bugale.

En miz mae diwean, mestr-skol Viévigne (Côte-
d'Or) a oe kaset dirak lez-varn Dijon, gant eun
nebeut tadou, evit bezan drouk-komzet d'o bugale
eneb d'ar Relijion. Al lez-varn a gondaonas ar
mestr-skol, mes prestik goude Briand a zizammaz
anezan en hano ar Gouarnamant. Breman tad
abad n'hall ken dougen klemm.

Ine ho pugale a vo disprizet, ho kredennoù a vo
laebet... Tadou ha mammou, pleget ho chouk,
roet peuc'h... Ho pugel a zo d'ar Gouarnamant
ha nan d'ac'h!

Setu aze ma c'henvroiz ker, labour goant hon
mistri-skol neve. Laret 'zo d'e, ha kredi reont,
eman gante ar wirione. Ni a gred a hendall, hag



MENNOZIOU HON LENNERIEN

Da heul ar pennad hon doa moulet diou zun-zo :
O tizrei diwar an oferen » embannet e diweza rummen *Kroaz ar Vretoned*, ha ne skriuan d'eoc'h nemet evit hen anza : n'am eus ket bet c'hoaz kement a blijadur o lenn eur gevren eus *Kroaz ar Vretoned*.

Gwithamez, 30 Eost 1908.

Aotrou ker,

Plijadur am eus bet kenan o lenn ar gevren « O tizrei diwar an oferen » embannet e diweza rummen *Kroaz ar Vretoned*, ha ne skriuan d'eoc'h nemet evit hen anza : n'am eus ket bet c'hoaz kement a blijadur o lenn eur gevren eus *Kroaz ar Vretoned*.

Her lavarout a ran d'eoc'h evit ho starta en ho mennoz, nan abalamour ma kredan ho pefe ezom beza kalonekaet, mes abalamour ma kredan e c'hell al lennerien ober vad ha plijadur d'ar skrivagnerien en eur lavarout d'ezo ar sonjezonou o deus savet en o c'halon.

C'houi 'zo ar c'henta a anavezan, kalonek awal'c'h evit lavarout d'an dud : war goll emaoamp o vont, ha kenta penn-abeg hon dismantr eo ar pont re ledan a zo bet savet etre Breiz ha Bro-C'hall. Nag a walleurion e vijemp tremenet a-biou d'ezo, ma vijemp chomet digabestr! Na bras eo va anken, evel ho'h hini, o sellet oc'h an amzer da zont, e Breiz!

Ne daly ket ar boan d'in displega ar sonjo-ze dirazoc'h. Kredi a ran, dioc'h ho kevren, emaoamp henvel hor spered breton ennoamp. Kredi a ran ive n'eus ket da falgalon, daoust da gement a reuziou graet en hor bro, rak den na ve dilezet gant an Aotrou Doue nemet pa 'n em zilez e-unan, nemet pa chom en e zifians hag en e falgalon.

Eur sonj am meus da rei d'eoc'h da zellout piz outan, mar plij ganeoc'h. Pegwir eo kaer kenan hor bro, ha pegwir ne hellomp ket mirout oc'h ar gantreourien estren da rei lies a wech o skouerion fall en hon touez, perak *Kevredigez Breiz* na glaskfe ket an tu da c'houmit Bretoned Bro-Gambri da zont en hor bro epad an hanv? Ar re-ze, da vihana, a hellfe diskouez d'hor c'heñverioz n'eo ket red trei kein d'ar brezoneg evit beza tud savet mat.

Bretoned Bro-Gambri o kantreal en Breiz Arvor a hellfe rei dorn d'eoc'h ha d'ho mignoned da zihun adarre ha da zigeri kaeroch' spered ar Vretoned keiz. Da vihana, o skouer a helfe stourm oc'h hini ar gantreourien gall. Kement-se na vije ket a-walc'h, a dra zur, evit advele Breiz. Da startaat ar skouer roet gant Bretoned Bro-Gambri, ar re c'haoump a zo e tu *Kevredigez Breiz* a rankfe komz atao brezoneg en o zi hag ermaez, gant an oll a oar brezoneg. Perak ive ne zougomp ket *hemdez* dilhajoù ar vro, o wellaat anezo eun tammik, pa vez red?...

Bremañ an oll a zougou bragou ledan evit mont war varc'h-houarn, nemed ar Vretoned, int-i, hag a zo ar bragou-bras o dilhad broadus!... Kredi a ran koulskoude ne zilez ar Vretoned gizioù o zadou koz nemet rak ma kredont sevel evelse ; darn vras anezo a gred beza savet uheloc'h, pa geizout war roudou ar vourc'hizien, rak ma kredont eo ar re-ma desketoc'h evito o-unan.

Ha den na ziskouez d'emp hemdez, dre e vuez pemdejek, e c'haller beza ken desket ha ken savet-mat hag ar vourc'hizien, o chom koulskoude gwisket e giz ar vro hag o komz hepred yez ar vro!

Digemerit mat, Aotrou, ma gwella gourc'hemennou.

D. P.

Ni garje gwelet, a dra zur, hini pe hini eus hon lennerien o skrivan d'imp bep sun e zont diwarbenn *Kroaz ar Vretoned*, n'e ket hepken 'vit he meuli, o nan! mes ive 'vit he gourdrouz, nep a gavfe e ve ezom.

Trugare meurbed d'ar mignon leal-man a deu da zisplegan dirak an holl eur mennoz leun a furnez hag a bouez. A dra zur, ma teufe bep bla hiniennou eus Breiziz Tramor da dremen ar mizioù hanv en hor bro, da gozeal gant an dud, da gomz gante brezoneg, kement-se a zigorf e zaou lagad da veur a hini eus ar Vretoned.

Ma, setu krog, aboue ar bla-man, Bretoned Bro-Gambri da zont da Vreiz-Izel. Ar bla-man hon deus bet an enor hag ar blijadur da zigemer pevar aue, an otro Evans hag e vignoned, ha ma dije bet pozet pelloc'h, o dije, zur mat, laket kalz a

Vretoned souezet, rak an otro Evans a gomze brezoneg hon bro, kazi koulz hag e hini.

Dizrei a refont c'hoaz, red eo kredet, da lakat dirak daoulagad ar paour, koulz hag ar pinvik, skouer tud a bep micher, a bep stad, ha n'emaent ket o klask tec'hel digant o bro, nag o klask heilh roudou-all ebet, nemet re o zadou koz.

AR BRUC

Kinniget da J. T.

Ar varzed 'deus kanet, gant o monez an dousan, Kened ha koantiri hon broig Breiz-vihan ; Gwerzioù trist, soniou dous, barzonegou dispar, Pep tra a zo bet groet 'vit meuli hon douar.

Budet kaer ac'h eo bet meurbed hon menezioù, Chomet soun ha kalet a-dreuz ar bloaveszioù ; Hon lenneier en bleun hag hon c'hoajeier don, Hon zanon dadius o deus bet meur a zon.

Me a gano d'am zro eur zonis vihan verr, En lenn d'eur vleunen moudik ha dister ; Ar brug eo he hano pe bleun ar broiou paour ; Gallout rafet lazet : bleun ar c'halonou aour.

Dreist an oll vleun a Vreiz ar brug eo a garau, Daoust hag hi nan eo ket marteze ar gaeran ; Koulskoude 'tal kalz-all me he c'hav c'hoaz fard, Rak gant al lann melen e ra kaerder hon Bro.

He c'harout ran dreist-oll 'naskout m'eo eun arouez Dimeuz an dousan tra halfe kaout an den kez Evit e frealzi er bed trubuilhus-man ; Eus ar wir garante ec'h eo ar merk gwellan.

Karout, bean kare, setu c'hoant bras pep den, Karout heb ar vue, karout da virvikeh, Morse ne vag kalon a-walc'h a garante ; Mervel en eur garout, gwellan maro e ve.

Evel eur galon vat, ar vrugen na c'hoenvet ket ; Na gwellan skouer eta evit ar vignoned ! Evel hokedou-all, ar brug n'eo ket skedus, Mes gwelloc'h ec'h eo kalz, he bleun 'zo hirbadus.

Eun de, pa vin oajet, em jardin me hado Ar vleunen a garau e-touez an oll vleunio ; He gwel a roio d'in c'hoant da vont da repoz Da vro ar garante 'tal ma mignoned koz.

Mabig EFFLAM.

AR C'HRISTEN

E Skol ar Skritur-Zakr hag ar skiant-vad diwarbenn Sakramant an Aoter

1^o N'eus nemet digeri Aviel sant Yan, er c'houec'hvet pennad, hag e wellet eno merket kaer ar c'homzou-ma lavaret gant Jezuz d'ar Juzevien : « Me eo ar bara a vuez diskennet eus an env. An nep piou bennak a zebro eus ar bara-ze a vevo da viken ; hag ar bara a roin-me eo va c'horf, evit buez ar bed. » (Aviel sant Yan, vi, 51, 52)

Ar Juzevien o c'homprens evit doare, rak lavaret a rejont : « *Daoust ha penos e c'hello hema roi d'emp-ni e gorf da zibri?* » (Sant Yan, vi, 53).

Ar memes tra Doue a lavaret evel ma lavar brema ar Brotestanted : « An dra-ze, eme ar re-man, n'hell ket beza gwir! An dra-ze n'hell ket beza gred ! » Hor Zalver avat, e leac'h mout a-du ganto, chench lavar evel lavaret d'ezo, lakeomp : « Va mignoned keiz, entent fall a rit ac'honan ; n'e ket va c'horf, mes ar skeuden, ar patrom anezan eo am eus sonj da roi d'eoc'h ha da re-all divezatec'h ! » Jezuz a lavar d'ezo startoc'h eget arak : « E gwirionez, e gwirionez, m'hell lavar d'eoc'h, ma ne zebrit ket korf Mab an Den ha ma ne evit ket e wad, n'ho pezo ket ar vuez enoc'h. An hini a zebr va c'horf hag a ev va gwad en deus ar vuez a bado da viken, ha me hen dasorc'h'o d'an deiz diveza eus ar bed. Va c'horf a zo e gwirionez eur vagadurez ha va gwad e gwirionez eun eysaj. An hini a zebr va c'horf hag a ev va gwad a jom ennon ha me ennan. » (Sant Yan, vi, 54, 57).

O klevet ar c'homzou-ma, setu petra en em gavas : lod eus e ziskibien o kaout anezo re start da gredi a yeas kwit diwardro Jezuz. Ha chench lavar a ray Jezuz evit an dra-ze, a zont d'eoc'h?

Ne raio ket : ar wirionez en deus lavaret, n'eus leac'h ebet da zislavaret an distera. Kaeroch e lavar d'ezo c'hoaz : « Ar pez am eus lavaret, emezan, a ra nec'hantant d'eoc'h hag a zeu d'ho kwall-skouer, dre 'n abeg n'oc'h ket evit kompren penos e c'helfen roi d'eoc'h va c'horf da zibri brema, e keit hag ema va c'horf war an donar, mes petra lavarfech, ma welfech Mab an Den o pignat e leac'h ma 'z edo arak? » (Sant Yan, vi, 62, 63).

Ar Juzevien a zilez skol Jezuz, e gwita dre ne oant ket, war o meno, evit kredi e gomzou, daoust ha n'int ket henvel-buez ouz ar Brotestanted ne fell ket d'ezo kredi Aviel Jezuz-Krist evel m'ema, hag a zispleg anezan diouz o fenn o-unan, en doare ma plij d'ezo? Mes gant an hent-se n'ez eer ket gant ar wirionez, gant ar wir rouden merket gant Doue d'an dud. Sant Per ha diskibien-all gantan a gredas Jezuz war e gomz. O wet hiniennou o trei kein d'ezan, Jezuz a lavaras d'e ebestel : « *Daoust ha c'houi ive a fell d'eoc'h mont kwit diouz?* » Sant Per a respontas : « *Mestr, da gaout piou ez afemp-ni? Ganeoc'h ema komzou ar vuez a bado da viken.* » Gant Jezuz ema komzou ar vuez a bado da viken, da lavaret eo : e gomzou a zo ar wirionez hec'h unan ha n'hellout lakat an den da fazia, hen touella. Sant Per hag an diskibien-all chomet da heul hor Zalver a ziskouez d'emp ar gristenien vat ha feal hag a gred komzou an Aviel, pe i o c'homprez pe n'o c'homprent ket, dre ma 'z edo, her gouzout mat a reont, galloud ha skiant Doue dreist hini an den.

2^o Pa oe deut evit Jezuz an eur da c'heneh, ne gaver evit e loja nemet eur c'haouic'h distera, mes da vihana an elez a ro da glevet en eur o c'hanadeg hag eur steredenn logernus a zeu da bara en noz steredennet hag a ziskouez an hent da zont d'e azeuli. Pa zeu da vervel war ar groaz, an heol e kaon d'e Grouer a gollas e sklerijen, ar reier a frailhas evit diskouez edo e poan, an douar a zigoras. O fellout d'ezan chom ganeomp betek fin ar bed war an douar evit servichout da vagadurez d'hon eneoù, e teu da gzar e c'hloar, e zonelez, dindan spesou distera dre ma 'z eo plijet se gantan. Atao den d'e c'her evel ma 'z edo, goude beza gred ar bromesa d'e ebestel ha d'e ziskibien genta, e teu da zvel ar zakramant (meulet ra vezo!) eus an aoter, en doare n'hou eus gwelet ha ma 'z edo merket er pennad XXVI eus Aviel sant Vaze. Jezuz en eur zvel ar zakramant-ma na lavar ket evel ma fell d'ar Brotestanted : debret eus ar bara-ma, evit eus ar gwinn-ma rak, ar bara-ma, ar gwinn-ma eo ar skeuden eus va c'horf hag eus va gwad ; ne lavar ket zoken : « ar bara-ma eo ma c'horf, ar gwinn-ma eo va gwad », rak n'eo mui na bara na gwinn, o zroet en deus en e gorf, en e wad, en e ene hag en e zonelez ; n'ez eus mui d'ar poent ma komz nemet an diavez, ar spesou eus bara ha gwinn etre e zaouarn o vont da gommunia e ebestel. Rak se e lavar : *an dra-ma* (ar pez a oa bara ha gwinn arak ha n'eo mui brema) *eo ma c'horf, an dra-ma eo ma gwad.* »

Evit klask digarez d'o c'hoaz ar Brotestanted a hellfe lavarfe penos pa lavar Jezuz : *an dra-ma eo ma c'horf*, kement-se a zo ar memes tra, pe tost da vat ar memes tra evel pa lavare : *Me eo ar gwinn*. Me entent an daou dra-ze ; n'int ket ar memes. Setu ama penos : Pa lavar Jezuz ez eo ar gwinn, ne entent ket lavaret d'an dud ez eo e gwirionez eur gwinn, mes ez eo henvel en eun doare bennak ouz ar gwinn pe ouz kement gwinn 'zo. Ne lavar ket en eur ziskouez eur gwinn : « Me eo ar gwinn-ma. » Ne ziskouez gwinn ebet, mes rei a ra da glevet raktal e pe zoare eo henvel ouz ar gwinn : « Er memes tra ma ne c'hell ket ar skour dougen fronez, ma n'ema ket stag ouz kef ar gwinn, c'houi ive ne zougout fronez (a vertuz evit an env) ebet, ma ne jomit ket stag ouzin-me (dre ar stad a c'hraz) ». (Sant Yan, xv, 4) Ar pez a lavaran aman diwarbenn ar gwinn a ve gwir da lavaret ive diwarbenn meur a gomz-all eus an Aviel, evel ar re-ma : *Me eo an hent, me eo an nor...*

Jezuz pa lavar ar c'homzou-ma ne ziskouez gwinn ebet, nag hent, nag dor ebet, e leac'h en eur zvel sakramant an aoter e ziskouez ar bara hag ar gwinn, pe kentoc'h ar spesou anezo, hag o

lavaret neuze : an dra-ma eo va c'horf, an dra-ma eo va gwad, e roe da entent sklear e oa c'henchet ar bara en e gorf hag ar gwinn en e wad.

Me her goulenn, ha diesoc'h e oa da Jezuz kuzat e c'hoar, e ene, e zouelez dindan spesou dister, eget war an eur, dre eur gomz, renta ar vuez da Lazar, roi ar gwiled d'ar re zall, ar c'hlevet d'ar re vouzar? ... Her gouzout a reomp, eo a-walc'h d'ezan fellout ober eun dra hag an dra-ze a deu da veza, dre ma'z eo holl-challoudek.

Kaout a reer choaz er Skritur-Zakr menek eus ar Zakramant (Meulet ra vezo!) eus an aoter. Sant Pol. en e genta lizer d'ar bobl a Gorint (xi, 27, 28, 29) a lavar kement-ma : « An hini, emezan, a zebro eus ar bara-ma hag a evo eus ar c'halir-ma en eur stad fall a vezo kablus, (en devezo da respont) eus a gorf hag eus a wad Hon Aotrou Jezuz-Krist. Ra zeuio eta an den da welet mat e pe stad eman arak dibri eus ar bara hag eva eus ar gwinn-ma, rak an hini a zebro hag a ev ane en eur stad fall a zebr hag a ev e gondaonedigez. » Ma ne ve ket Jezuz-Krist e Sakramant an aoter, pe seurt torfed heuzus a helfe ober an hini a ya d'e reseo er stad fall, e stad a bec'hed marvel? Eur pec'her, evit d'ezan kemer eun tam bara da derri e naon hag eur hanne gwinn da derri e zec'hed, na zebr na na ev ket, a drugarez Doue, e gondaonedigez. An Abostol sant Pol, o komz en eun doare ken spontus, a ziskouez e krede mat edo e gwirionez korf ha gwad Jezuz-Krist e Sakramant an aoter.

An Iliz sartel katolik, sklerijennet gant ar Spered Santel he deus bet a viskoaz intentet mat komzou an Avel ha re an Abostol sant Pol diwarben Sakramant an aoter. E pep amzer he deus kredet he-unan ha prezeget he c'hreden d'ar gristenien : emañ ar zakramant-ma Jezuz-Krist o chom ganeomp war an douar evit beza e kreiz ankenioù, trubuilhoù ar vuez-ma skoazel, nerz ha frealzidigez hon ene. An dud uhella, ar re ouizieka ha speredeka a zo bet war an douar abaoe ar penn kenta eus an Iliz, o deus bet kredet emañ e gwirionez Jezuz-Krist e Sakramant an aoter. An histor e-unan a verk meur a vuzud hag a rent testi d'an artikkel-ze eus ar Feiz. Luther e-unan her chrede hag en deus her prezeget. Protestant a gaver hizio an deiz en Alamagn hag her c'hred c'hoaz. Calvin dent warlerc'h Luther en deus bet an hardizegezh da lavaret ne oa Sakramant an aoter netra ken nemet ar skeuden eus a gorf hag a wad Jezuz-Krist. Chench en deus gret gant e benn e-unan komzou ar Skritur-Zakr : ar Wirionez n'ema na ganta na gant e ziskilien war e lerc'h.

Jezuz e Sakramant an aoter a zo buez hag ene ar gwir Iliz, hag an nep na grad ket ar mister bras-ma a c'hras hag a zilvidigez a zo, hep mar ebet, emenez eus an hent a gas da levenez ar Baradoz.

KATOEL.

AR GER VILLIGET

GANT

LAOUIK

PENN-SKRID

Ar bevare warn-ugent a viz kerzu 19... daou zen yaouank a deus da gemer an hent-houarn en ti-gar Gwengamp, da seiz eur eus ar beure, evit mont da Bariz. Eur c'hanfard peuzek vla hag eur plac'h oajet a oa deut d'o ambrouk : ar vam, gant he mab yaouank, deut da ren he mab, kaer hag he merc'h o kwit an bro.

Abred e oant ha setu i da evan pep a vannac'h kafe 'n eun hostaleri tost d'an ti-gar evit 'n em domman, rak an amzer a oa yen. Ar mab-kaer a re ar gaoz e-unan, peurvuian, michans, evit kuzan e nec'hantant ; e bijed a zec'he he daoulagad gwech an amzer, hag ar pôtr yaouank a droe e beun evit kuzan e zaero. An hini goz a oa gwir skeuden an dizesper, gant he bizac'h zec'h ha melen, he daoulagad dislivet gant ar gozni ha ruiet gant an daero, a zave war-zu he mab-kaer evel evit goulenn true.

Eur plac'h hostaleri a deus d'o zerviji, hanter-

gousket c'hoaz. Raktal e tec'has hag en em gavchont o-unan 'barz ar zal drist gant he zaolio goulou regennet en-dro d'ar voger, hag a leze al lamp laket dirake en eun hanter devalijen.

Ar re yaouank a evas o c'hafe hag a debras peb a vegad bara, mes an hini goz na douche da vann.

— Perak na debret ket, mam? 'me ar pôtr yaouank.

— N'em eus ket a naon, emei.

Dizrei a reas war-zu he mab-kaer, ha, gant eur vouez trist :

— Fanch, 'n han Doue, chom er gêr! Nan e ket re diweat c'hoaz. Me 'zo zur penôs Ervoan an eus keun breman d'ar pezh an eus laret d'it : evrus 'vo ouz da welet dizroet.

— O ya! dizro ganiump d'ar gêr, 'me ar pôtr yaouank ive.

Ar mab-kaer na respontas gir.

— Ma mabig paour, emañ an hini goz c'hoaz, en eur jantan he daouarn, mar nau eus mann a hend-all gouest d'ober d'it dizrei war da giz, da vihanan, kemer true ouzin. Gouzout a rez penôs hebou n'ez pijs ket bet ma merc'h a garez kement ; mar 'teus eun tammin anaoudegez evidon eta, ne dispartij ket ac'hanomp evelse. Chom ganiump! Ar barrad arne-man a dremenno ha pep tra en em gavo par hep dale mar karez ma chilao.

— Ma mam, emean erfin, keun bras am eus o laret kement-man d'ac'h, mes 'n hallan ket chom : ma zad-kaer ha me nan halfomp biken 'n em glevet ; daou benn kaled ec'h omp hon daou. Ouspenn ze, lec'h an evo d'ober gwap ouzin mar tizroan ganac'h. Anna a hall chom, ha me a yelo da c'horrit eur gweuneg bennak evit gallout mont en eur vereri.

— Dever da bried a zo heuilh ac'hanout ; ho taou a fell d'ac'h chom ganiump.

— Laket an eus ac'hanon ermaez e di.

— Keun an eus breman ; dizro!

— N'hallan ket, emean.

— Ma! emei, en eur zavel, kerz! 'mes diwall eus da gont, mar ankouez biken ar promessa az poa gret d'in pa 'm oa kinniget d'it ma merc'h, ma malloz a vo warnout!

— Bezet dinec'h, emean, hec'h evrusted e vo dalc'hammad kentan tra a glaskin.

Mont a rejont ermaez. Eno ar vam a stardas c'hoaz eur wech war he bruched he bugel a gwitae evit ar wech kentan, hag e laras d'ei :

« Bez war evez du-ze, ma merc'hig kez ; kement a dud en em goll en Pariz! Taol ple d'ober dalc'hammad da zever en-kenver da bried ha chom start 'n ez fe. Ma bennoz a zo gant. »

Mont a reas er watur, ar pôtr yaouank a fonetas an anevael hag e tec'has hep trei he fenu. An daou bried a chomas da zellet outi ken na droas en penn ar ru ha neuze ec'h ejont d'an tigar ar maro en o c'halon.

(Da heuilh).

LAOUIK.

KELEIER EUS AR BEU-OLL

An nijerien. — An dud, 'vel ma ouier, a zo krog ive da nijal. Helibini a zo etre pevar pe bemp den, ar mare-man, kas goût pehini ane a nijo ar pellan.

Dilon, en Pariz, unan ane, Delagrange, an eus nijet epad eun hanter-our. Elec'h isklil, an nijerien o deus mekanikou hag a gerz dre dan, sepet ma hallout dibradan ha, savet en er.

Er gêr devet. — En Amerik, en askont d'ar c'hoajou bras, e krog awec'hou taniou-gwall eus ar grevusan. Ar zun-man eo bet deut evelse an tân eus eur c'hoad en eur gêr, hag ar gêr a-bez a zo bet devet : dek milion a goll. Eus ar gêr-ze eo ét an tân d'ar gêr nesant.

Tud, da vihanan, n'int ket bet devet.

Er Marok. — Kannou a zo bet adarre etre hon zoudarded hag an Arabed. Hon zoudarded o deus bet an trec'h ; lazet o deus kalz a Arabed. Eus hon zud, n'eus nemet eun ofiser lazet hag unan warn-ugent den tizet.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UEHL

CARNOET. — Pardon sant Weltas. — Disul divezan gant eun amzer eus ar re gaeran, e tirede tud a-leiz da chapel sant Weltas. Yec'hed an ine, yec'hed ar c'horf a oa abeg peden kalonek Karoediz hag o amezeien. An daoulinou a stoue dirak skeuden ar zant, ha dour ar feunteun a ruihe war an izili.

En kalonou ar c'hernevaded e oa tom ar gwad an de-se. Piou na ve ket joaus da ze pardonioù e vro! Mes aman e oa c'hoaz muioc'h a levenez, dre ma oa eur c'hernevad pen kil ha troad, an otroù Keranfle'h, kure Plourac'h, o lida ar gouel. Komz ha kan entanet ar pardonner a c'houee nerz en kalonou ar bôtrez yaouank bôdet gant akat en-dro d'an. Eur blijadur e oa gwelet ané, dindan daoulagad karantezou o fastored mat, an otroù Olichon, person, ha Bourse, kure, o selaoù prezege an otroù Keranfle'h, prezeg leun a gentelioù mat hag a guzilioù reiz.

Stank e oa ar beden ; ken stank all e oa al levenez. Kouz en dic'hougaded ar c'hok 'vel en droion pardon, e rene an urz vad hag ar giziou dereat.

Pardonioù kaer a zo bet gwelet mes neubet a ouelioù a mod koz a zo bet kavet. Neb a gar gwelet outé, ac'h ey a benn bla da bardon sant Weltas.

COADOUT. — Eun anevael lazet. — Ar Baill, labourer en Coadout, an eus kollet eun anevael kezek kouet eus ar park en eun hañdon. Ne oa ket asuret.

GWENGAMP. — Ar presbitor koz. — Konsailherien Gwengamp, (da vihanan ar re ane n'int ken nag eus an dud honest nag eus ar gristenien), o deus votet daou vil pemp kant lur evit ma vo gret gant ar presbitor koz eun ti da lojan ar vistri skol, an dud hep arc'hant na lojeiz, ha da lakat levriou.

Daou lur ha hanter-kant a zo bet votet ive, 'vit ober eun nor neve elec'h an hini goz torret dre nerz lezen al laerou.

An avalou. — Disul o gwerzet en Gwengamp, avalou 13 ha 14 real ar c'hañt. Hineanoz, zoken, o devoa tapet 1h real.

Kaon. — Dimeurz diwean eo marvet, e Gwengamp, an itron de la Bégassière oajet a drizek vla ha pewart-ugent. He bue hir a zo bet eur skouer-vad evit an oll. Betek he c'hlenved diwean he deus labourret evit sikour gwiskan ar paour. Ne oa ket eus an dud-se a glask daouhanter ar wirione, ha dalc'hammad eo bet stard en he c'hreden ha Breizadez a gilou.

Bet mam da bemzek bugel he devoa eiz ane 'n he c'hichen pa 'deus rentet he huanaden diwean. Breman bla ha hanter koant poanias da vad ewit ar gouel dispar a oa en Gwengamp pa 'oe kuronet Itron-Varia-Wir-Sikour. Marvet eo e kenver an de-se, e-pad an ofern-bred. Doue da vo gant hec'h inet Renerien Kroaz ar Vretoned a gemer lod e kaon he bugale, rak bep sun ar groasig-vihan 've lennet en o zi.

X...

IVIAS. — Tapet gant ar mekanig. — Gwihern Allainguillaume, oajet a 14 vla, a oa e zorn gantan en kouf ar mekanig, o sellet an donerzer, pac'h eas e viz etre daou dant hag e oa troc'het krenn. Kaset e oa ar paour kez pôtr raktal da gant ar medisin.

BREIZ-UEHL

FOUJER. — Breuriez Breiz. — Breuriez Breiz he deus an deion-man eur vodadeg en Foujer, digor aboue disul.

An otro Lanjuinais eo ar penn-rener. Beaun man gantan : an otroù Estourbeillon, Loth, Vallée, Calan, ha kalz a re-all. Betek breman, setu petra zo bet : an otro Lanjuinais 'n eus gret eur brezegegen evit ober kanvou an otro Palys maro aboue ar vodadeg diwean. Gonde 'zo bet votet da hanvan ar bureo : Penn-rener, an otro Lanjuinais, rener kevren an Istor, an otro Estourbeillon ; rener kevren al labour-douar, an otro Boby de la Chapelle ; sekretour, an otro de la Chesnais ; tensorer, an otro Bihan.

E-touez kement a zo bet laret betek breman, lakomp 'zo bet diskouet reiz gant an otroù Calan ha Loth eo bet skrivet *Guez de Roland*, (chanson de Roland, e galleg) gant eur Breton eus Bro Roadoù.

hon c'hoant eo e teufe ar vistri-skol d'ober skol hep dispenn ar Relijion, diaze pep furnez, pep doajanz, pep evurusted ha pep gwirione!

Hon Bro a zo kollet gant an diskadurez fall, ar gelenadurez dizoue.

Ha karet eo hon mistri-skol?
N'int ket, ma Doue!

Evel ma laren uhelo'h, kalz eus hon mistri-skol n'int ket galvet d'ar gargz pouner-ze hag emaint enni evel tud diwriennet. An darnvuian ané, ma vijent chomet elec'h oa dleet d'e bevan herve o renk, a vije bet hirie mevelien ha mitizien. Savet eus eur renk izel izel, — ar pez n'eo ket eur pec'hed, m'o dije bet galvedigez — bet kaset d'ar skoliou diwar goust an holl, a boan bet gante o zesteniou-studi, an dud kez-man n'en em anveont ken.

Fae bras a vo gante diskenn en o renk gwechall; kazout a refont ar re uhelo'h evite, dre n'hallfont ket tostât d'e; hag evelse e voint dre-holl eur strollad tud lor'chus, kazet gant an dud izeloc'h ha disprizet gant ar re uhelo'h.

Ne hœuilfont ar bobl nag en e c'hiziou, nag en e wiskamant. O gwiskamant a vo dishenvel-tre diouz hini an dud-all, ken dishenvel ma'z eo a-walc'h o gwelet, pôtred pe ver'ched, evit laret dustu: set' aze eur mestri pe eur vestrez-skol!

Siell an dizouelez a zo war o zâl ha n'o deus darempred nemet etreze.

Ze na harz ket ane d'ober brud; red eo d'e diskwel ez int eun dra bennak: en pep souben hep aman e vo boutet o fri. En kalz a barouziou, mar be trouz, e c'hall an dud laret trugare d'ar mestr-skol, a deu da vezan, en amzer ar votadeg, pep tra nemet eur mestr-skol.

E blijadur gaerane vo, evel a laran, o fikrial hag o tispeun ar valeien. Koulskoude ar mestr-skol n'en deus ket da glemm...

Pa oa paeet ar person 900 lur ar bla, hen an evoa 1.800 lur; p'eo laeret an holl veleien, e 1.800 lur a chom gantan. Perak neuze huchal war ar re-all? Evit dizrei sellou an dud diwar-nan? Marteze. Bepred eo, ma vije fur, ar mestr-skol a roje peuc'h. Aon bras am eus, eun de da zout, ne zigouefe d'ezan paea e c'hour'hemennou: kement e plij d'ezan hirie labea beleien, kement-all, marteze, e vo mastaret arc'hoaz...

Kement-man eo justis Doue: ne ret ket d'ar re-all ar pez na garfec'h ket e ve groet d'ac'h honunan!

Ah! ya, ma Doue, kalz a zishenvedigez a zo etre ar mestr-skol gwechall hag an hini a vremen. Bezan 'zo c'hoaz, a dra zur, meur a hini koz hag a zo karet gant an holl; mes kollet int en touez ar re neve evel eur spilhen en kreiz eur garg foen.

Hag en keit se, Clemenceau ha kensorteda zerr bepred skoliou kristen...

AR YEODET.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deat da vale en Breiz

d'he c'hamaradez en Pariz

(KENDALC'H)

Kergoz, 1 a viz Gwengolo 1908.

— Sonjet ket, emean, n'e ket brao bean aman gant ar banne avel skufanius-man?

— Perak ne chomec'h ket en iliz? Me na skwizanz ket o klevet kanan ar c'hantikou brezonek.

— Klevet awalc'h am eus ane gwechall!...

— C'hopi n'ho pens kalon ebet eta 'vit ho pro ha treo ho pro?

— A! Me zo didonet!...

— Gwir a laret, emeon. Al leueou, eur wech didonet, n'anaveont ken o mam.

Ober reas ouzin eur zell treuz; mes kerkeret e reas eur minc'hoarzh.

— Bal emean, n'omp ket eus ar memez tud, herve welan!

— A drugare Doue! emeon.

Eno ec'h achuas hon c'hoaz. An den-se, plac'h kez, e sav ma c'halon outan. Ha lavaret 'zo meur a hini eveltan e-touez ar Vretoned o deus kwitaet o bro, ha, zoken, e-touez ar re 'zo er ger?

C'hoaz, herve 'm eus klevet, n'e ket ar bôtred eo ar gwasan, ar merc'hed eo!

Kenavo, Lusi. Ne sawizan ket ganit; mes te halle skwizanz ganin.

Da gamaradez vat.

TEREZA.

Kergoz, 9 Gwengolo.

Lusi gez,

Eur « roman » 'm eus da gontan d'it ar wechman!... Leun eo ma spered a vil sonjezon, ken ne ouian dre betore-penn kregi gant ma c'hoaz. C'hoant a-walc'h am mije d'ober 'vel ar varvailherien-all, kregi dre ar penn moan ha lakat pep pöz an eil warlerc'h egile, e doare ma kreskefe da blijadur dre ma lennfes, mes ma c'halon o lampat a harz ac'hanon da welet skler a-walc'h da diluian war o rez an treo souezus a zo c'hoarvezet ganin an deiou diwean.

Pa zonjan, Lusi gez, eo bet darbet d'az Tereza bean beuzet, ha beuzet dre draitburaj! Ma vije bet du-ze en Sant-Denis, e kreiz an noz, o tremen war bont ar Sën, e vije bet arnet kement-all ganin, c'hoaz, c'hoaz!... Mes aman, en Breiz-Izel, en kichen Kergoz, war greiz an da! — Petra? emeout, « apsehed » a zo dre du-ze ive?

Lak ane 'vel a gari, ar ganfardet ac'h an da gontan d'it dioute; ar pez a ouzon, biskoaz n'em oa kavet ar seurt gante nag en Pariz nag e lec'h-all.

N'em lizer diwean e komzen d'it eus Fanchig. Setu dec'h ar beure ha me o welet Fanchig oc'h arruout en Kergoz. Deut e oa, emean, da glask avalou 'vit e dad. Mes ne gredan ket, me, e lavare ar wirione, rak, 'vit marc'hajou avalou, ne reas hini ebet.

Paour kez Fanchig!

Pedet e oa da chom aman gant e veru; dre ma oa gouel ar Wech'hez hag eur pardon a-dost, en eul lec'h hag e ve gret Kerfons anean, setu d'abarde e oa divizet ec'h ajemp hon zri « Nitiolas », Fanchig ha me, d'ober hon felerinaj d'ar chapel. Mat! Setu ni en henchou, sart pe a hallempe bean. Fanchig, p'an evoe gouveet piou 'oa « Nitiolas », en em lakas da wapad anean; me a c'hoarze hag evelse oe kavet berr an hent.

Pan arrujomp war dachen ar pardon, « Nitiolas » an evoa sec'hed; Fanchig hag hen a yeas d'evan bep ar chopinad, ha me a azeas a-dost dindan eun torkad dero. Bean oa kalz a dul o vont hag o tont, darn endro d'ar chapel, stummet ouz peledinad deut da bedi ar Wech'hez; darn-all war an dachen pelloc'h, c'hoaz ha skrigu gante, henvel ouz tud ha na glaskont nemet o fijadur. Etouez ar re-man e tolis ple, dreist holl, da beder blac'h yaouank ha da daou bôtr o vont kazet-ouz-kazet eus an eil host'iri hag eus an eil stal d'eben, ha trouz gante 'vel pa vijent dija krak-veo. Ar merc'hed oa gwisket hanter giz kêr, gant korfennou a bepliou hep hanter mouchoer, ha hanter giz ar vro gant koufou ha davanjerou, davanjerou berr-berr dantelezet ha koufou lodikennet hirr helpennet du-man war choug o c'hil. En eur vont d'ar chapel, e c'houlis gant Fanchig piou e oant.

— Parizianezed, emean, a dra zur, pa ceont kement a ardou.

Mout a rejomp, Fanchig ha me, da vihanan, d'ar chapel da laret hon fedennou ha da lakat hon prof. Goude, Fanchig a laras d'in:

— Bean 'zo, war bouez eun hanter-our kerzet ac'han, eur c'hastel koz; bet oc'h o welet anean?

— Nan, emeon; et e vijen bet an de-all, mes an otro « Nitiolas » aman n'houlle ket dont ganin.

— Tontón Nitiolas, eme Fanchig, pe c'houi baeo hon lod d'imp, pe c'houi deuo ganimp d'ar c'hoz kastel.

— Deomp d'ar c'hastel! eme pôtr e gant skoed leve, aon d'ean dija rak e arc'hant.

Ne chomjomp ket pelloc'h da zellet ar pardon; 'benn dek munut goude, e welemp dija, etouez ar gwe, magorennou ar c'hastel dismantret.

Rôk arruout gantan, avat, hon doa eun draouien da dreuz hag eur waz. A greiz ma oamp o vont, ha ni o klevet eur joloriad tud o tont war hon lerc'h.

— Arru eo, emeon, ar re a gomzen ane d'it, breman zouden, Fanchig.

Ar peder Barizianez hag o zaou ganfard a deue 'n eur ganan ha kazet-ouz-kazet, sparlet an hent gante a-dreuz-da-dreuz.

— Lezomp ane da dremen, eme Fanchig.
Ha ni o tivaloat da gerzet.

Merc'h paour, red eo d'in lakat al lizer-man d'it er post raktal, mes dustu-dak, e krogan gant eul lizer neve hag az tevo benn ar zun a deu.

Lar eur bater bennak evidon, rak ezom bras am eus.

Da vignonez.

TEREZA.

An Tad Rot

Aet da visioner, an tad Rot n'en devoe ken c'hoant na preder nemet kerzet war roudou an tadou Nobletz ha Maner, o devoa kerzet, int-i o-unan, war re ar zent koz « o deus savet Breiz-Izel. »

Adsevel a reas ar misionou a oa bet gwall-zilezet da heul an dispac'h vras; o lakeas da vleunia ha da deurel frouez. A drugare d'ezan kement parouz a Vreiz o deus bet eur mision en hanter-kant bloavez diwezan-man ha kalz ané zoken meur a hini. Ha dre ma 'n deus tremenet en deus lezet war e lerc'h froueziou a zantelez; muioch a c'hred ouz an ofisou hag ar zakraman-chou, breurieuz santel, boazamant ar c'hanouennou da gaeratal lidou sakr.

Hoc'h c'hantikou brezonek dreist-oll a zo bet harpet ha miret gantan: santout a rae nag a nerz santel a zo enne da zével an ine ha da rei dionaskel d'ar beden. N'eus netra evit se en tu-all d'hon c'hantikou brezoneg. « Gwellat skoazel ar misioner, emean, eo ar c'hantikou brezonek! Mision hep hân, mision maro! »

Gant ar c'hantikou, gourc'hemennou Doue ha re an Iliz a gleved dreist-oll e misionou an tad Rot.

N'en devoa ket e bar evit displega ar gourc'hemennou, olakaat evel en eun daolen dirak an daoulagad, hag o diskleria d'an holl d'o intent fraez. Aes ha splan e oa e vrezonag; marellet e oa e brezegennou gant kant ha kant a zanevellou, a henvedigeziou, a fentigellou zoken, a dalc'he atao war zihun ha war evez spered ar zelaouerien.

Ma oa ken c'houe d'ar Vretoned komzou an tad Rot, ma oa evel kalon ouz kalon gante, eodre ma vage en e greiz eun ene breizad, eur garantez entanet ouz hon mam-vro Breiz-Izel, gant he yez, he spered; he gizioumat. Gwellat skouer d'ar veleien yaouank, re duet darn ané d'ober eus o c'henvroiz « ar bobl » evel ma laront, da laret eo eun dra dishant, oc'h ankouaet eo ar bobl-ze « ar bobl vreton » bet merket d'ezhi gant dorn Doue eur c'halvedigez dreist-ordinal, d'imp-ni d'he bleina war hent ar c'halvedigez-ze da heul hon sent hag hon misionerien vinniget.

Pedomp evit an tad Rot an deus gwestlet e vuez d'al labour santel-ze ma sikouro ac'hanomp eus lein an nevo da boania bepred ha gwella-ouz-gwell evit

Doue hag ar Vro.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiu

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant: F. GOUETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOÙ

16 real ar blaiz evit Breiz ha Bro-C'hall.
3 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broto-keltiek.

RENEREDEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑNOU-KONVERZ

An Aotrou TOSNELLES, 27, ball Charner, a zigamer sez

Ar brezonek hag ar foiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
PURNEZ AR GED.
Gant brezonek eo deud ar foiz.
Gant ar galleg ez aio a Vreiz.
PURNEZ AR GED.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonik.
Yez ar foiz eo; ma ve trec'hiet,
Ouspenn ar Vaz, e ve Pec'hiet
MILAN.

LENNADEGOÙ « BREURIEZ AR BREZONEG »

Ar zul diweañ a viz Gwengolo, en Peurit.

Ar zul kentan a viz here, en Calanhel.

AR GOUELIOU BREZONEK

Gouelioù « Kevredigez Breiz » en Plougastel-Daoulas

Ar zun-man eta e oa gouelioù *Kevredigez Breiz* en Plougastel. Ar zun a deu e vo kavet aman an tenor ane war e hed. Betek breman, eo bet an treo eus ar c'haeran. Gwalet 'zo bet ar bla-man seurt ne oa ket bet gwalet c'hoaz, ha heman koulskoude bean an unnekved gouel da *Kevredigez Breiz*.

Ar brezeged da ziger ar gouelioù a zo bet grat en brezoneg, ha gret gant Ar Yeodet. Ar pezh 'zo kaoz e oa bet komzet, betek breman, galleg elec'h brezoneg, eo ne oa ket a Vretoned gouiek a-walc'h evit 'n em diluian en brezoneg en gouelioù ken kaer ha dirak kement a bobl.

D'Ar Yeodet eo bet an enor kentan. An enor 'zo ive 'vit *Kroaz ar Vretoned* ha *Breuriez ar Brezoneg*, hag an dra-ze sm oa c'hoant da lavaret.

Gouelioù « Breuriez Breiz » en Foujer

Pa oa *Kevredigez Breiz* o kregi gant he gouelioù en Plougastel, *Breuriez Breiz* a schue he re en Foujer.

Ar Brezoneg n'e ket bet ankouaet er goueliouman. Da gentañ, an otro Loth, kentan mestr en Skol-Veur Roaon, an eus gret sevel eur strollad ispisial evit pleal *da zeshi lenn ar Brezoneg d'ar vugale, ha da z'hour ar re a labour gant se*.

D'au eil, an otro de Laigüe an eus gret rei skoazel *Breuriez Breiz* d'ar Yaouankiz kristen a zo e sonj rei prijou da zevel en galleg hag en brezoneg peziou c'hoari lennet diwar istor Breiz. 'Vit barn al labourioù, *Breuriez Breiz* a hanvo zoken unan eus hec'h izili.

Hon mignoned en enorioù hag er c'hargou

An otro Coroller, rener *Breuriez ar Brezoneg* ha skrivagner anavezet mat gant hon lemmerien dindan ar hano a Wellas, a zo bet hanvet sekretour bras evit *Kevredigez Breiz* e-kerz gouelioù Plougastel.

Ar Yeodet a zo bet ive hanvet sekretour 'vit ar gevren vrezonek.

An otro Coroller a oa bet hanvet adarre sekretour ar brezoneg, en *Breuriez Breiz*, e-kerz gouelioù Foujer.

Enorioù ha kargou a goue evelse war dioukhoa hon mignoned. Sehlant o deus galloud da dougan ane.

Mes *Kroaz ar Vretoned* ha *Breuriez ar Brezoneg* a zo fougenn eo wetel o renerien dibabet evelse evit ar c'hargou uhellan.

BREURIEZ AR BREZONEG

Gouel Plounerin

Dimerc'her, de had'pardon eur chapel en Plounerin, e oa er barouz-man ar gouel danzaet aboue pell 'zo gant *Breuriez ar Brezoneg* hag he mignoned. Ar vignoned-se eo arabad gortoz pelloc'h evit trugarekat ane; an otrone beleien, an otro person hag an otro Kerven, a zo bet holl vadeleuz en hon c'henver hag o deus, evelse, kresket a-neve hon nez-kalon evit mont adarre pelloc'h, d'eur barouz-all.

Beañ oa, stag ouz gouel *Breuriez ar Brezoneg*, eur gouel-all, hini ar Yaouankiz kristen, o ren anean an otro de la Villeralabel, vikel-vas evit al loden gall eus an eskopti.

An otro de la Villeralabel, daoust ne oar ket ar brezoneg, an eus bet lavaret meur a gomz vat a-du gant Breiz Izel hag ar brezoneg. Trugare d'ean! Beañ oa c'hoaz pôtred yaouank eus Lannou, pôtred iskwi hag a zo o zreid, o daouarn, o diouvec'h ken gwevn oute ha teod eur c'hemenner en e c'heno. Kaermet o deus bet kalz ar gouel. D'e ive ha d'o mistri trugare! Ha pelec'h eta e oa ar gouel? Ar gouel a oa gant ar vugale. Gouelioù *Breuriez ar Brezoneg* a zo holl 'vit ar vugale! Gret e veint n'e ket 'vit ar varzed, na 'vit ar bôtred yaouank, na 'vit ar bobl, na 'vit seurt ebet nemet evit ar vugale! Pep den an eus e zonzj, e vennoz, e labour; pep den an eus e zell war tra pe dra, hag a lak e boan da bleal gantan, e-pad e vue. Reo-all a dol o zell war ar bôtred yaouank, lod-all eman o zell war an dud etre; lod-all war al labourerien hag ar pennou-tiegezh; ni, en *Breuriez ar Brezoneg*, eman hon zell war ar vugale, 'vit deski d'e lenn ha skrivan ar Brezoneg. Setu aze eun dra hag a zo freaz, skitèr, ez da intent. Ne welomp, en hon gouelioù, interest-all ebet nemet hini ar vugale, ar vugale vreton, bugale ar barouz e vemp deut eun da labourat.

Ar re-ze, en hon zonzj, a zo da vean laket pen-da-beñ 'barz an enorioù, da leun, da ganan, da c'hoari peziou, d'ober kement mad a zo merket er gouel.

En Plounerin ma n'o deus ket, ar wech-man c'hoaz, c'hoariet eur pezh, ma o deus lezet o renk gant o bredeur hennan, da vihanau lennet o deus ha kanet ken brao ha tra sonioù brezonek eus an dudiusan.

Da heul ar vugale, e oa deut kalz a dud; eur pevar c'hant hanter pe bemp kant den a oa dastumet en porz ar skol greden, kinniget a galon gant al leanezed gweun, trugare d'e. Beañ oa ive beleien, otrone personed Lomikel-an-Trez, Calanhel hag hon mignon Roc'hlan, otrone kureed Plouerae'h ha Plougras ha c'hoaz reo-all gante.

Da zikour Ar Yeodet ha Dir-Na-Dor, oa 'n em gavet Traou Yeodi hag a ganas zôn ar *Populo*, ar c'horn-butun burzudus.

Da gentañ, e oe c'hoariet ar pezh: *Ar gwaiz Breizad*, savet a-ratoz enep ar re a dor lezan ar zul, eur pezh leun a nezh hag a vue. Etra ar pennadou anean, e komzas an otro de la Villeralabel, ha goude, Ar Yeodet.

Chlaouet mat e oent; spered an holl a oa gant ar pezh a glevent hag a welent... Allas! eun tam trouz a renkas sevel gant eur mevier bonnak, hag elec'h mont da gousket a oa, dre wall-chans, 'n em gavet war hent ar gouel.

Pa oe tremenet ar c'hoad-man, an treo a had-krogas adarre 'vel diagent. Roet oe ar prijou d'ar vugale ha gret an tombola, emesk kalz a c'hoaz hag a feut. 'Vit peurglozan, pôtred Lannou a

douellas, kouls laret, daoulagad an dud gant eun abaden c'hoarioù eus ar c'hoantan.

Breman, dindan eun toullad deioù, hon deus esper e tiwano an had breton a zo bet hadet e kalon ar vugale. En Plounerin, evel er parouziou-all, *Breuriez ar Brezoneg* he devo souden eur strollad bugale koumanantet da *Grouz ar Vretoned* ha gweslet da leun ha da skrivan ar Brezoneg.

Neuze, n'hon devo ket a geun d'hon arc'hant, d'hon foan ha d'hon amzer!

DIR NA-DOR.

Setu aman hanoioù ar vugale o deus lennet hag o deus bet prijou digant *Breuriez ar Brezoneg*. En o zouez, eun toulladig a oar lenn mat ar Brezoneg; darn-all o deus ezom c'hoaz eus eun tam studi; prijou o deus bet 'vit rei d'e kalon da zerc'hel gant o labour. 'Vit bean akwit mat da vial, gōut leun ha zoken skrivan brezoneg, eun dra o deus d'ober ha da c'houlenn digant o zud: kemer *Kroaz ar Vretoned* dre ar post. Kaset ve d'ar vugale 'vit eiz real ar bla, elec'h 16 real e konst d'ar re vras. War ar marc'had, pep bugal an evo eur c'haier da skrivan tammou brezoneg; o vean war roll *Breuriez ar Brezoneg*, an evo tu epad ar bla da c'hounit muioc'h 'vit an evo roet.

Setu aman eta an hanoioù :

POTRED

Kentan rummad

Kentan priz : Yves Mignot.

Eil : J.-B. Goast.

Trede : Auguste Bricon.

Pevar : Jozef Guisic.

Pempved : Pierre-Marie Guézennec.

C'houec'hved : Y.-M. Bris, Louis Huon ha Jean Péron.

Kentan accessit : Victor Mignot.

Eil accessit : Emile Coz.

Eil rummad

Priz : Yves-Marie Jézéquel.

Accessit : Jozef Disez.

MERCHED

Rummad kentan

Priz kentan : Berthe Divet.

Eil priz : Aune-Marie Pérébeozen ha Jeanne-Marie Thoz.

Trede : Jeanne Guézennec ha Marie Ropars.

Pevar : Marie Mignot.

Pempved : Cécile Ruello.

C'houec'hved : Aune-Marie Le Coz.

Seizved : Jeanne Martin.

Accessit : Mathilde Turquet ha Céline Guézennec.

Eil rummad

Kentan priz : Marie Lavanou.

Eil priz : Marie-Françoise Guillou ha Jeanne-Marie Lavanou.

Kentan accessit : Jeanne-Françoise Ruello.

Eil priz : Maria Jaouten.

Trede priz : Marie Goadoné.

Daou briz ouspenn a zo bet roet 'vit ar c'hañ da : Berthe Divet ha Marie Ropars.

Ma muian-karet

'Greden ket e ve kavet, zoken en Breiz-Izel, Lapousig ebet ken koant ha te, ma zuzunell; Laouen ez out, ma dousig, gant da zellou lirzin, Da vouezig dous ha koant ha da c'hoaz ken skitintin.

... Ma muian-karet! Maonez koant Breiz-Izel, Gant da goef dantelezet o hejan en avel, Gant da er ken laouen, da vizaj ken joaus, Da zionchod ru 'vel roz ha da dal ken skedus.

BREURIEZ AR BREZONEG

Perak eo bet savet,
penós e kerz

Perak eo bet savet « Breuriez ar Brezoneg ? »
Breuriez ar Brezoneg a zo bet savet 'vit deski d'ar vugale. merc'hed ha pótrez, ar re ane a zo en oad a 10, 11, 12, 13 ha 14 vla, lenn ha skrivan mat ar brezoneg.

Penós e kerz « Breuriez ar Brezoneg ? »

Dre lennadegou,
Dre oueliou,
Dre goumananchou,
Dre skrivadegou.

Petra eo al lennadegou ?

Al lennadegou a zo krogioù savet er parouzioù etre ar vugale da c'hónt pere a lenne ar gwellan ar brezoneg. Al lennadegou-ze ve gret evellen : Da gentan, eun den a volante vat eus ar barouz a glask bugale da zeski lenn hag a gas o hanoioù da *Vreuriez ar Brezoneg*. Houman a gas d'e *Kroaz ar Vretoned* 'vit man da lenn 'c'han da de al lennadeg.

Petra eo ar goueliou ?

Eur gouel a ve gret asambles gant al lennadeg, 'vit he c'haerit.

Er gouel-ze e ve roet ar prijou d'ar vugale, hag ouспен, bodet kalz a dud da glevet eur brezege ha soniou, da welet eur pezh-c'hoari ha da gemer lod 'n eur c'hoari-sac'h pe tombola.

Petra eo ar c'houmananchou ?

Ar c'houmananchou eo freuz ar gouel. Ar vugale, goude bean bet o frijou, a zo pedet da gemer *Kroaz ar Vretoned* 'vit *eiz real* ar bla, 'vit ma talc'hfont da lenn treo mat, en brezoneg mat, da 'n em gustumi ouz o yez ha da 'n em domman outan mui-ouz-mui. Al lennadegou hag ar goueliou, hep ar c'houmananchou, na gontont, koulz lavaret, netra, herve mennoz *Breuriez ar Brezoneg*, p'eo gwir e klask da gentan ha dreist pep tra bodan ar vugale, 'vit deski d'e lenn ha skrivan ar brezoneg.

Hogen, ne deskont lenn ha skrivan brezoneg reiz, nemet dre *Groaz ar Vretoned* lennet pep sun.

Petra eo ar skrivadegou ?

Daou seurt doare skrivadeg a zo.

Da gentan, d'ar vugale a gemer koumananchou 8 real, ve roet war ar marc'had eur c'haier da hadout eur bla. War ar c'haier-ze e tleont adskrivvan pep sun eur pennad beunak diwar *Groaz ar Vretoned*, dek pe daouzek linen, da vihanan, o lakat warlerc'h diwar pe niveren e ve kemeret. Ar skrivadeg-man a gont 'vit ar prijou bep bla.

D'an eil, roet e ve, diou pe der gwec'h ar bla, danve labour d'ar vugale war *Groaz ar Vretoned*. Diwar an danve-ze e reont er gêr eur pennad-skrid a gasont goude da Zant-Briek. Eno ve di-vanket al labourioù ha roet prijou d'ar re wellan.

Petra a c'hone ar vugale o vean en « Breuriez ar Brezoneg ? »

Deski reont lenn ha skrivan o yez, ar pezh n'eo bet biskoaz deshet d'ar *Vretoned*, daoust ma 'z eo eur vez evite bean ken dilec'het, ma na ouzont ket ar pezh a oar pep pobl, komz, lenn ha skrivan he yez.

A hend-all, petra a c'hone c'hoaz ar vugale o vean en « Breuriez ar Brezoneg ? »

Gounit a reont prijou eur wech ar bla, d'an nebentan ; lod o deus en kement c'hoari-sac'h a ve gret gant ar goueliou.

E berr gomzou, 'vit bean en « Breuriez ar Brezoneg », petra 'zo red d'eur bugel ober ?

Kaout c'hoaz da zeski lenn ha skrivan e yez, kaout nebentoc'h 'vit pemzek vla, ha kas *eiz real* ar bla da *Vreuriez ar Brezoneg*, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Da biou eo gwestlet « Breuriez ar Brezoneg ? »

D'an otro sant Ervoan Landreger, eur zant bras hag eur Breton kalonek. Ter oferen ar bla a ve

lavaret 'vit ma skuilho Doue e vennoz war Breiz-Izel, ha war labour *Breuriez ar Brezoneg*.

Petra a die eta pep bugel ober adalek an oad a dek vla ?

Goulen gant e dud kas e hano hag e arc'hant da *Vreuriez ar Brezoneg*, ha chom enni betek an oad a bevarzek vla. Sikour vras e kav enni 'vit bean divezetoc'h eur Breton leun-a nerz-kalon hag a fe en e vro.

AR C'HRISTEN

E Skol ar Skritur-Zakr hag ar skiant-vat diwarbenn ar Werc'hez Vari

Eun dra iskis eo enori ar mab ha disprijout, kasaat ar vam. Setu ar pezh a gaver e-tonez kristenien, e relijion ar Protestanted. Ar Protestanted en em zav gant kounnar, zoken a-enep ar Werc'hez glorius Vari. Pe seurt droug en defe great eur wech beunak houma d'ezo ? Droug ebet morse. N'eus ken kaouz, me gred, eus o c'houman nemet an drouk-spered milliget, diskaret d'ezan e c'hal-lou, *flastret d'ezan e benn* abaoue m'en deus ar Werc'hez Vari lakeet he Mab Jezuz er bed.

Mari o veza Mam da Jezuz, ha Jezuz o veza Doue, Mari a rank beza Mam da Zoue. Ar Protestanted a anzav koulz hag ar gatoliked ez eo Mari Mam da Zoue, ha rezon o deus, pegwir he deus lakeet eur Mab er bed hag a zo Doue.

Mes enep pep gwir, e kav d'in, e teont d'he disprijout, da gounnari en he enep, hag eun dra iskis ez eo euz o ferz.

Ar c'houman-berc'o a dleer da ober : Mari o veza Mam da Zoue, ar zantela eus an holl grouadurien, e tleer renta d'ezi muioc'h a enor, a respet eget da hini-all ebet eus krouadurien an Aotrou Doue. En eur rouantelez, daoust ha ne ve ket amzere gwelet an holl sujidi leuz a azaoez, a garantez ouz ar roue hag o teurel dismezganz, kement ha ma hellont, war e vam ? Ar Werc'hez eo ar zantela eus an holl grouadurien. Mam Doue ha Mam ar Gristenien, an hini he deus roet d'ar bed an Doue Salver. Penós chom hep he enori ! Doue an Tad en deus he enoret oc'h he dibab evit beza Mam d'ar Messias. An el Gabriel a zeu gant doujanz da stoui e benn dirazi en eur lavaret : « *Me ho salud, o leun a c'hras ! an Aotrou Doue a zo ganeoc'h ; benniget oc'h dreist an holl gwirgez.* » (Sant Luk, 1, 28).

Jezuz en deus bet outi doujanz ha karantez, sentet en deus outi evel eur c'hrouadur mat ouz e vam. Ar Gristenien gatolik a ra evel Jezuz, ha petra 'zo dereatoc'h, petra helfent d'ober gwelloc'h ? Kaout kasoni ouz ar Werc'hez, nac'h outi enor ha doujanz, daoust ha n'eo ket mont enep an Aviel hag ar skiant-vat ? Ar seurt-se n'hellout beza na gwir vugale da Zoue, na gwir vreurdeur da Jezuz.

Klevit petra lavar ar Protestanted diwar-benn ar Werc'hez : « Mari, emezo, he deus bet ouспен eur c'hrouadur. » An dra-ze n'eo ket gwir ! Entent fall a reont war ar poent-ma c'hoaz an Aviel gant o fenn o-unan. En Aviel ez eus hano eus *Breurdeur Jezuz*, ha pennaos ne vije ket bet ? E yez bro ar saou-heol ne gaver ger ebet evit lavaret kenderv. Abraham (e lev. ar *Jenez*, xiv, 14) a ro an hano a *vreur* da unan haavet Loth, petra beunak ne oa heman nemet niz d'ezan : *fratres enim sumus*. E bro ar Sao-heol e oa ar c'hez da roi an hano a vreurdeur d'ar gerent nez. Ar c'hez se a weler c'hoaz e bro an Hebreed, kenvroiz Jezuz. N'eo ket soez e ve eta en Aviel hano eus breudeur Jezuz, n'eo ket, avat, ma vijent gwir vreurdeur d'ezan, mes kerent tost, kerent nez nemet ken. Evel-se sant Jakez a zo a-wechou, er Skritur-Zakr, galvet breur da Jezuz, ha n'edo ervat nemet kenderv-gompez d'ezan. An Tadou santel eus an Iliz hag ar skrivanerien-all o deus bevet er c'hañtejeou kenta warlerc'h hor Zalver a verk d'eomp n'he doa Mari mab-all ebet nemet Jezuz. Eunn tam mat easoc'h e oa d'an dud-ma gouzout ar wirionez war ar poent-ma eget ne deo breman, emichans, d'ar Protestanted goude eur pennad hir a amzer. An Iliz santel katolik, eus he zu, he deus bet kredet atao ha diskrieriet d'an dud n'he devoa ar Werc'hez Vari nemet eur Mab hepken : Jezuz, Salver ar bed.

Eur gaon bras a lavar c'hoaz ar Protestanted, pa brezegont ez azeul ar Gatoliked ar Werc'hez glorius Vari. Ar Gatoliked na azeulont nemet unan : Doue. O gourc'hemen kenta, e gwirionez, eo hema : « Hun Doue hepken a zeuli, ha dreist pep tra holl a gari. » Sevel a reont o mouez evit enori ar Werc'hez ; kausa a reont d'azi meuleudion ; ne azeulont ket anezi avat, evit d'azi beza Mam da Zoue, rak kalz dreist i eman Doue. En eur zont d'he enori, an enor a rentont da vam Doue a zav betek Doue e-unan, ha gouzout mat a reont eo digant Doue e teu da Vari, koulz ha d'ar grouadurien-all pep gras, pep santelez ha pep mad.

(Da heulth).

KATOLI.

AR GER VILLIGET

GANT
LAOUIK

(KENNALC'H)

I

Ar bevare warn-nugent a viz kerzu, da bemp eur d'abardec.

Eur gêr vihan micherourien tost da Bariz, serret en eur c'helc'h ijinererez pe « uziou ». An noz a deu abred, rak eur vougen yen, liou an erc'h, a zo war an amzer. Nebent a dud er ruio. Gwreg eur micherour beunak bet o pourvé danve he c'hoan, eur moucheour stam paket endro d'he fenn, pe mevel eur marc'hadour bet o welet e hostizien. Ar vicherourien n'e ket achu c'hoaz o devez hag ar vourc'hizien a zo dastumet en o zi da gempenn pep tra evit noz Nedeleg.

Eus eur ru vihan, enk ha tenval, e teu eun den, eur baner gant ouz e zorn. Labourat a ra an noz 'n eun ijinererz beunak, ha hastan 'ra founnus, marteze dre ma tosta d'an eur, hag ive evit 'n em domman. Gwisket fall ec'h e evit an amzer a ra : eur brago glas tano evel eun tam paper, eur chupen c'hlas memes tra dindan eun all uzet ha disliou, hag eur c'hoaz vouchouer endro d'e c'hoag. Moustacho hir ha du a dreuz e vizach skarzet liag e zaulagad a lugern dindan o jouchenno. E ziouskoa ledan hag e izili trent a verk a-dreuz d'e zilhad skanv 'vel a ra korf an derv koz ha sec'h en hon bro a-dreuz d'o mantel vân.

Heman n'e ket ar gozni a ra d'ean bean ken treut : mar 'n eus pemp bla ha tregont, n'an eus ket ouспен.

N'e ket roufennou ar gozui a zo war e zrem ; ar c'hroc'hen melen, stag ouz an eskern, a zo dizec'het gant an tan, tan an ijinererz pe hini an evach, marteze an eil hag egile.

Mont a ra, e choug pleget hag e zellou d'an douar, en eur heulth koste an tier. Arru en korn ar ru, eur plac'h en em gav dirakan.

— Nozvez vat, Fanch, emei. O vont d'ho labour e oac'h ?

— Ya, emean, 'n eur chom en e zav ; c'houi 'zo aze, Soaz ; er marc'had e oac'h bet, 'm eus son ?

— Red mad e ! ma deu a labour an de, ar zungev-man ; evelse e refomp pred Nedeleg a-gevret, ar pezh n'arru ket alies, hag e vo red kaout eun dra beunak ouспен d'ar c'hustum.

— Nedelek, emean, gant eun huanaden ; gwir e, fenez eman.

— Hag ho pried, penós eman he c'hont ? emei ar plac'h.

— Eur pennad 'zo ec'h e klanv, emean, 'n eur ober eun hij d'a benn.

— Eu gwirione ! Petra he deus evelse ?

— N'oun ket 'de ha de ec'h a he nerz kwit. Bet eo o kaout ar medesin, ha n'e ket evit gouzout petra he deus ; laret an eus, avat, mar delc'h da fallaat evelse, n'he deus ken eur bla da vean.

— Paour kez Anna ! mont a rin d'he gwelet fenez pe warc'hoaz... Hag ar vugale ?

— Ar vugale n' an int ket reuv kennebeut ; petra 'fell d'ac'h ! Ar vam klanv, me o labourat, n'o deus ket dalc'had ar pezh o deus ezom ha 'n em zantout a reont a ze. Ar gwaleur a zo warnomp, Soaz, emean, gant eur vouez tenval.

— Ya, siouaz ! Fanch ; ar gwaleur a deu re alies hep bean galvet, mes anzavet hoc'h eus gret e hent d'ean evit dont en ho ti, Laret a ran ze d'ac'h, rak karante am eus ouzoc'h : eus ar memes parouz ec'h omp. Pemp bla a zo fenoz e tigonehoc'h ho taou em zi da c'hortoz kaout lojeiz. Pa zonzjan kaerat ha sartat daou zen yaouank e c'ac'h neuze ! Piau an ije sonjet e vije troet an treo evelse evidoc'h ! O ma mignon paour, mar c'h eus c'hoaz eun tam kalon, dilezet kreñn an evach ! Sonjet en ho pried hag en ho pngale ec'h eus laket en eur stad ken trist ! Ar medesin n'anave man e klenved Anna, rak he c'halon, dreist-oll, a zo klanv gant an dizeper, o welet he bue kollet, he daou grouadurig barnet da vevan en dienez hag ar baourante, hag an hini n'he deus bet 'met ar si da vean karet re, o kouean er brasen dizurzo. He bue a zo etre ho taouarn, Fanch, sovetaet anei ! »

Hen a chilaoe, peget e benn, ha na respontas gir.

— Kenavo, emei adarre ; mar gwelet Per war ho hent, laret d'ean dont war eun d'ar ger, holl e vefomp ouz hen gortoz.

(Da heuilh).

LAOUIK.

Yan ar Bombarder, pe ar Gouriz-plouz

(Da hostizien va Bro.)

Gwechall-gwechall, nep n'ean doa ket daoulagad a oa dall. D'an amzer-ze, Yan ar Bombarder a rede ar Vro, brudet dre ma vije dalc'hmad o vont dont eus an eil maner d'egile, hag a-dreist-holl eus an eil tavarn d'eben, gwech war e dreid e unan, gwech war kein eskernek eun teuz a vare'h : eur marc'h Laouik ken treut ma c'houlenne an dud digant Yan penos ne veze ket troc'het dre an hanter gant leven-gein ar marc'h.

Yan ar Bombarder na ree nemet pismiga an hostizien : eur wech edo o tistaga en roulladen en eun davarn, ha kalz a dud a deue eno d'e glevet o son ar vombard ; ha setu Yan deut mat d'an hostiz, dre ma chache dour d'ar vilin. Mez jistr an hostiz o veza trenk, an dud a nebentaas ; an hostiz a yenaas ouz Yan hag a c'houlennas digant ar Bombarder arc'hant e voued hag e evach, pe e vije krouget.

— « Ma ! eme Yan, mont a rin d'ar groug neuze mar fell d'ec'h, rak arc'hant n'am eus ket, mez eur gavaden an eus great : penos lakat ar jistr trenk da zousaat. »

— « Dres ! eme an tavyarnour, a zo mat evidonme. Gwerz d'in da gavaden. Pegement e fell d'it kaout ? »

— « Pemp skoed warn-ugent, pe netra. »

— « Emomp ebarz ; koulskoude ker eo. »

— « Ac'hanta, eme Yan, setu aman va c'ha vaden ; red eo farda eur gorden blouz, hir ha stank ; trei anezi seiz gwech nao dro endro d'ar variken, ha div eur goude, an evach an trenka a deu dous-mel. »

Hag int kercent d'ar bern-plouz, da farda ar gorden varzudus, an hostiz o sacha plouz diouz ar bern, Yan o kordenna dre ma teune, hag o pellat hep an tammig ; ar Bombarder a zigouezas evelse betek an hent : eno e kinnigas daou liard d'eur potrig evit trei ar gorden en e lec'h. Ar pòr a droas, hag an hostiz a denne plouz diouz ar bern.

Penos 'ta ? Yan, tapet pemp skoed warn-ugent gantan, a droc'has kwit ; en eur lavaret : « N'eo ket eun touel tonella eun toneller. »

N'eo ket red lavaret e chommas trenk jistr an tavyarnour : heman avat a drenkas muioc'h-mui e spered outan, ken na droas e dammig empenñ e leaz kaouledek, pa welas e oa bet touzet gant Yan ar Bombarder.

Hag abaoe eo deut ar c'hiz dre ar Vro da lavaret eus eun hostiz, pa n'ez a ket mat au traou gantan en e stal : « Heman en deus tapet eur gouriz-plouz. »

SPERN- GWENN.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Arc'hant Frans. — Na pa ne ve nemet hec'h arc'hant, hec'h arc'hant, da vihanan, an eus talvoudegez vras er broiou-all. Eur bilhed a gant lur eus Frans a dalv 100 lur ha trizek gwenneg en Alamagn ; kant lur ha c'houec'h gwenneg en Bro-Saoz ; kant lur ha nao gwenneg en Aotrich ; kant tri lur ha tregont er Spagn ; kant c'houec'h lur warnugent er Portugal ; daou c'hant seiz lur ha triugent ha nao gwenneg er Mexik ; daou c'hant c'houezek lur ha triugent trizek gwenneg er Chin.

Neuze 'ta, pa po c'hoant da vale ha da zispign nebeut, et d'ar Chin, pe d'ar Mexik, pe d'ar Spagn, pe d'ar Portugal.

Goueliou ar Zakramant eu Londrez. — Goueliou ar Zakramant en ker protestant Londrez a zo er mare-man eun dra eus ar c'haerjan hag ar sone-zusan. Ar protestanted na digemeront na Sakramant an Oter hag ar Pab. Setu, aboue digwener, Sakramant an Oter hag ar Pab a zo meulet hag enoret e kreiz ar ger vras-ze a c'houec'h milion a dud, a zo, koulz lavaret, ker-veur ar Protestanted dre ar bed-holl.

Aboue eun toullad blaveziou, e hadkrog ar relijion gatolik en Bro-Zaoz. Ouspenn ma teu eleiz a Protestanted da zilezel o c'hredennoù faoz 'vit dont adarre da gatoliked, ilizou a-bez (rak e-touez ar Protestanted 'zo lies a iliz ha lies a greden), ilizou a-bez a deu, a dam da dam, da chanch kiziou ha da hadkemer ar stum katolik. Kement-se a ro da gredi eman Bro-Zaoz war nezh da vean adarre katolik. Ar pezh 'zo zur eo penos gouarnamant protestant Bro-Zaoz a ra kalz gwelloc'h digemer d'ar relijion gatolik 'vit ne ra gouarnamant ar Frans, merc'h hennan an Iliz. Du-hont, eur bagad protestanted a fellas d'e ive harz ober en roui Londrez prosesion ebet, ha setu i da skrivan d'ar Roue, pab ar Protestanted. Ar roue a dizroas d'e o lizer, kwit da respont d'e a hend-all, hag ar prosesion a zo et ermeaz disul, tremen kant mil a dud wardro hag o heuilh, ha pemp mil warnugent a gatoliked Saoz oc'h ober gward war diou renk, en daou du d'ar roui.

Kannad ar Pab, ar c'hardinal Vannutelli, a zo bet diskouezet d'ean eur joa 'vel d'eun tad ha na ve ket bet 'boue pell zo etouez e vibien.

Ar vugale o deus bet ive o lod er goueliou. Pemzek mil bugel eus Londrez a zo bet en prosesion betek iliz Westminster, hag eno, ar c'hardinal-kannad an eus roet d'e bennoz ar Zakramant

Ar goueliou a zo bet eta eus ar c'haeran d'an daoulagad ha d'ar galon.

Seblantout e rer klevet mouez Hon Salver o lavaret da Vro-Zaoz, evel ma reas gwechall da Lazar : *Deus ermeaz eus da ve !*

An nijerien. — Eun Amerikan, Orville Wright, eur breur d'eun nijer-all hag a zo en Frans, an eus nijet disal epad eun eur ha dek munut, ha gret, us da vegou ar gwe, tremen pemzek leo an eur.

Hep dale, ne vo ken baleet en gwetur ; an dud pignet er mekanikou neve a rer ane « aeroplane », a dreizo an er evel ma ra ar gwenitied.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

BOULVRIAK. — Skoliou kristen. — Skoliou kristen Boulvriak a zo haddigoret dilun diwean Tadou ha mammou, kaset di ho pugale ; eno c'houi vo zur ane.

Foar. — Ar meur, c'houec'h a viz here, e vo foar en Boulvriak ; ebeulien, dreist-holl, a vo kavet da zibab en foar-man.

KASTEL-PAOL. — Pardon relegou sant Paol. — D'ar zadorn, ar 5 eus ar miz, en eun gave e Kastel an aotrou 'n Eskop Duparc, gant an trenn pemp eur, evit ober ar pardon bras e Kastel en enor da relegou sant Paol, kenta eskop a Leon.

An amzer a oa en e gæra ha zoken en em genderc'hel a reas war e du mad e tong ar gouel. D'an taol a 8 eur e teraonas prosesion ar gouloù. O na kaerat prosesion ! An dud a zouge niverus bras bep a c'houlaoen war elun en o dorn ; er roui a oa sklirijenn a bep seurt liou ma heller da gaout, hep ne vije klevet ken trouz nemet hini ar muzik hag ar chantikon brezonek o sevel eus an douar d'an env. War ar blasen vras, araok mont e-barz an iliz, an holl a zispak en eun taol kont o mouez evit kana a greis kalon ar Gredo. Da c'houde an aotrou 'n Eskos a bign er gador. Pebez prezegen gaer a reas ! Pebez kalon vrezid a zo en e greis, a lavare d'in unan ! An holl a felle d'ezo paka e holl gomzou, ha klevet e vije eur geilheñ o nijal ma vije bet unan d'an ampoent en ilizeur.

Antronoz, pell araos dek eur ne oa mui kador c'houlo en Iliz. An aotrou 'n Eskop a bign ouz an aoter evit kana an oferen. Ar c'hân, an ogrou, muzik Landerne a zo eun dudi o c'hlevet. Goude an Aviel an aotrou Tanguy, person e Plougastel-Daoulas, a bign er gador hag a zistag d'eomp eur sarmon brezonek eus ar c'haera diwar-henn buez burzudus sant Paol. Hen diskouez a ra d'eomp o kwitaat e vro, Breiz-Veur, war galvaden Doue evit dont da zigas sklirijenn ar Feiz e Bro-Leon. Ar vro d'an ampoent a oa pagan, an doueou faoz o doa o aoterioul, al laeron, ar vuutrierien a rene er vro. Sant Paol, dre nerz e brezegennou, e varzudou bras, a lakeas ar vro war an tu eman breman.

Goude ar gousperou, da fin ar prosesion bras, an aotrou 'n Eskop a bign c'hoaz er gador, en desped d'e skwisder hag a ro gant kalz tatant eur brezegenn diwarben penn, breac'h ha bloc'h sant Paol, o deus Kasteliz an eurvad da gaout en o iliz. « Mirit ar relegou-ze atao, Kasteliz, en ho tonnez, eun tenzor int kalz presiusoc'h eget hoc'h iliz hec'h-unan. »

Eur Pardoner.

KERMARIA-SULARD. — Pardon. — Pardon Kermaria an neva lec'h disul diwean, an 13 a viz gwengolo. N'em eus ket ezom da ober e veulodio, rak an holl a oar ervat e oa eur pardon kaer.

War-bek dek eur, kouz an oferen-bred, an iliz a oa leun-kouch. Kanet e oa an oferen-bred gant an otro Coadic, person Plouizi, koz person Kermaria, beleg santel mar zo. Gret en neus en oferen-bred eur brezegenn gaer a zo bet silaouet gant an holl.

Eur loden eus zonerien kolaj Lannou a oa deut ive da gaerat ar pardon.

Kaer meurbed e oa pep tra.

Da der eur e oa kanet ar gousperou, ha goude ar gousperou e oa gret ar prosesion evel an ordinal, kaeran ma eo gallet.

Kanet 'zo bet d'ar Werc'hez, ar c'haeran kanti-kou, ha rouanez an Euvou diwar he zron alaouret, a zigemere laouen pedennou he bugale.

Goude ar prosesion e oa gret Salut ar Zakramant meulet ra vezo, ha goude eo aviolet ar vugale vihan.

Trugare d'an holl veleien vat o deus sikouret lidan eur pardon ken kaer ha dreist-holl d'an otro Coadic, ar pardoner. Trugare da zonerien Lannou evit ar boan o deus kemeret da dont da zon da Kermaria. Eun niver bras a dud a oa diredet da welet ar pardon, darn evit pedi dirak skeuden an Itron-Varia, darn-all evit gwelet.

An Itron-Varia-Sulard a zo bet gwechall enoret bras, hag hon zadou koz o devoa eviti eun devosion dener ; gallout a reomp lavaret hirie en eur zellet ouz hec'h iliz kaer :

Re dister oa o chapel ; ya re dister, siouaz, Adsavet zo bet eun all kaeroc'h evit biskoaz, Eno an holl Vretoned deu hirie d'ho pedi, Eno c'houi ro, o Gwerc'hez, mennad da bep-hini.

Itron-Varia-Sulard,
Hon fatonez, ni ho kar,
Reit d'ho pugale o mennad ;
Ni ho pedi, Mari, o mam vad.

Bugel ar Werc'hez.

Da gened a zo dreist, dispar out da welet,
Da yec'hed a zo nezus, ze 'zo hep hen laret,
Rak n'a teus ket biskoaz kwitaet ar maeziou,

Evit mont, evel kalz, da redek d'ar c'herion...
Ze ra d'it e chomez ken yac'h ha ken seder.
Ken koant ha ken fur, ken dous ha ken tener!...

Eul Lenner.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deat da vale en Breiz

d'he c'hamarader en Paris

(KENDALC'H)

Kergaz, 18 a viz Gwengolo 1908.

Lusi gez.

Manet e oan ganit, ar zun-all, war hent eur
c'hastel koz, o vont da vale gant Nitiolas ha Fan-
chig. Mes primoc'h en em gav an neventiou ganin
'vit n'hallan o skrivan d'it... Ma larfen d'it petra
c'hoarve ganin adarre!... Mes ne lezomp ket a
leueou bihan war hon lerc'h; dastumomp ane
prim ha prim gant ar vanden.

Ar merc'hed hag ar bôtrez yaouank hon doa 'n
em gavet gante, m'a teus sonj, n'halljont ket tre-
men ac'hanomp hep lavaret d'imp eun toullad
pozioù skwiz hag a zisplijas kalz da Fanchig.
Panevert e ris d'eap paouez, an nije bet kann
gant an daou bôtr. Tremen a rejont ac'hanomp
koulskoude, ha mont ive treskek ar c'hoz kastel.

Pa oant oc'h arroud e lein an taroz eo diazeet
warnan ar magorion, e oamp ni o vont da dremen
ar waz a zisparti ar zaonen etre dion loden. War
ar waz-man n'eus nemet eur planken oc'h ober
pont. Setu me warnean. Aïou! A-boan 'oa d'in
bean gret eur gammed, hag ar pont o rampan, ha
me en dour war lein ma c'heñ.

Yannig a loskaas eur griaden; du-hont, e
krech an taroz, e klevis mouezioù o c'hoarzin da
respont d'eap. Me 'n em zibabe gwellan m'hallen;
mes koueet e oan war eur men; al lamm au evoc
haoutet ac'hanon, ha ne oan ket 'vit 'n em denn,
kaer am oa meskan. Panevert da Fanchig, hag
a lampas en dour, me gred e vijen bet beuet.
Nitiolas, heu, a rede endro d'in 'vel eur yar
veo. Eur pennad e reukis chom 'n em c'hoaze da
lezal ma fenn da ziskwizad ha ma dijhad da di-
zouran. A drugare Doue, an heol a oa tom, ha ne
zantis tam paourante ebet. C'hanta, pan eas Yan-
nig da welet ar pont, e tolas ple e'oa bet diblaset,
rôk ma oamp arri da dremen. Ar ganfarded ha
kanfardezed hon doa gwelet, ar re-ze o devoa gret
an tol. Yannig a verve e wad 'n e wazioa. Mil
boan am oc'h ober d'ean dont ganin d'ar ger
ha gortoz c'han d'eur wech-all da rei o laz d'ar
« Barizianed daonet. »

Ha breman, petra 'zo c'hoaz a-neve?... Ma
c'halon na ra fin ebet, an deiou-man, da lampat
'n em c'heiz ha ma spered da inyori ha da zou-
jal... Biken n'am miije kredet e vije bet ken
nechet Fanchig ganin evel ma c'h eo. Eur wech eo
bet aman o welet ac'hanon, aboue ma oan koueet
eu dour, hag eur wech-all 'n eus kaset eur
haouez, gant eul lizer, da c'hôut eus ma c'helo. El
lizer-ze e pede ac'hanon, abeurz e dud, da vont
d'achui ma c'hoaje da Gerroziou, ma welje,
emean, ha me oa arru yac'h.

Mes te gav d'it ma c'h au da Gerroziou e tizroin
ken na da Bariz hag e lec'h-all? Me 'n am eus ket
ar greden e rin!...

Soul-vui e welan Bretoned fall o chom dizablant
pe oc'h ober fae war dreo Breiz-Izel, soul-vui e
santan ma c'halon o tommant outi, dreist-holl,
aboue an de ma oan koueet en dour.

Ya, hec'h am o o tizrei ken da Bariz, rak — ouzit
hen auzavan, — Breiz 'zo eur vro doudus ha...
Fanchig eur pôtr mat.

Da gamarader karantezus.

TEREZA.

KOMZ FUR EUR VAM

Ar zun-all e klevis eur gomz hag a os enni ke-
ment a boell ma reukan he lakat aman.

Eur vam, neve vet d'el eur bugelig, a lavare,
ha hi Patizianez dimezet d'eur hourez en Breiz.

— N'houllan ket e homzfe ma mitez nemet
brezoneg d'am fôtrig. O komz outan brezoneg
e tesk d'ean brezoneg mat, hag o komz outan
galleg, e teskfe d'ean galleg fall.

Na pebez gwirione!

Nag a vam vretou a glever, en ker ha war ar
meaz, o chakat galleg fall d'o bugale vihan war
digare deski d'e ar galleg!

Ar mammou-ze n'eus ket unan (bezan 'zo
unan?) war gant ane hag a oar ar galleg, rak,
marfad, n'e ket goût galleg eo goût lavaret:
« Bonjour, boudet! Qu'est-ce qu'il aura à son
déjeuner ce matin? Du café? Oh! le petit chou à
sa maman! » — Ha kant ha kant tra evelse. Ze
zo bardellaj gallek, ha netra ken.

Er c'hontrol, ar mammou-man, peurvuian, a
oar brezoneg c'houek. Arabad eo d'e, avat, komz
brezoneg d'o bugaligoù.

Ha petra c'hoarvez evelse?

C'hoarvezout a ra, tra diboell, e teskont d'o
bugale ar pe-za ouzont ket hag e tremenont hep
deski d'e ar pe-za ouzont!...

HAG ADARRE

SEIZ WARNUGENT SKOL SERRET

EN ESKOPTI SANT-BRIEK

Ar framason kuzet dindan chupen Clemenceau
na baouez ket da c'hoari e bôtr. Urz a zo da zeri
hini ha hini an holl skolioù kristen, da lakat an
holl vugale dindan dorn mestrou-skol ar gouarna-
mant, ha gret e vo, rak an ugent mil framason a
zo en Frans a zo a-bell trec'h warnomp-ni.

Setu adarre serret en eskopti Sant-Briek seiz
warnugent skol merc'hed:

Seitek d'ar seurezed gwenn:

Plounez, Carnoet, Pontreo, Callac, Sant-Jili-ar-
C'hoat, Plouilliau, Hengoat, Triégram, Corlay, (ar
re-man eus an tu breton).

Peder da leanezed Coch:

Pleuveur-Gautier, Langaat, Rospez (eus an tu
breton):

Seiz da seurezed Broons:

Louargat (bourk), Louargat (Sant-Eler), Perros,
(eus an tu breton).

Etouez ar skolioù-man, bean oa ter, hini Car-
noet, hini Callac ha hini Tregrom hag o devoa
digemeret ar brezoneg. Ar re-ze, dreist-holl, eo eur
raun-galon evidomp gwelet ane skolet. Pedit reomp
ar mestrezed kalonek hag o devoa roet dorn d'imp
evit hon labour, da gredi eomp start a galon
gante er pleg pouans-man.

Ar vugale o devoa dastumet endro da Groat ar
Vretoned na voint ket ankouet. Marteze, bean vo
breman bugale serret oute dor o skol gristen ha
n'o devo ken 'vit komz d'e eus o Bro nemet mouez
Kroat ar Vretoned ha Breuriez ar Brezoneg.
D'o c'herent eta d'o miret er Vreuriez-man; seul-
vui ma vo ar vugale heskint ha gwall-gaset aba-
lamour d'ar yad, ra chomfont seul tostoc'h d'ar
Vreuriez a zo bet gret a-benn kaer evit o harz
d'ankouet hano o Bro hag hec'h honestiz.

..

Pa emomp o komz eus ar skolioù, setu eski-
bien Frans o paouez skrivan etreze eul lizer da
leun en holl ilizoù an 20 a viz gwengolo, hag e
laront ennan o zoug diwarben ar bezennou neve
gret enep d'an tadou famili. Komz a refomp eur
wech-all eus al lizer-ze.

AN DERVEN HAG AN AVEL

Me a gleve, da zerr-noz.

An avel 'n beg an derven goz,

Hag a lare: En Breiz-Izel,

Man ar gwir o vont da vervel.

An derven a lare: Ar gaou a drec'h ar gwir?

Nan, biskoaz an houarn nan eo bet trec'h

[d'an dir,

Biken, en Breiz-Izel, ar gaou put na reno,

Biskoaz n'an eus padet na biken na raio,

An derven eo Breiz-Izel,

Ha Bro-C'hall eo 'n avel,

Na pa c'houeze eus e wasan,

An derven a stourmo outan.

Rak he gwrien a zo don

'Barz en kalon ar Breton!

Eul Lenner.

AR BEURE

Al lapoused war ar bodou,
'N eur darnijal a gân sonjou;
Lagad an heol, 'us d'an dosen,
A skuilh a-leiz a sklerijen!

Kliewet a rer ar c'hloc'h sklitin
O son an anjehs mintin;
Deut eo ar c'houlz, ina kristen,
Da gas da Zoue ho peden!

War yeot ar prad, 'barz an draouien,
Ar gliz beure a stereden;
Ar bleun tener a grog ive
Da digeri, e pen an de!

Ar vrienen, en eur hastan,
Na chom tam 'bet da varc'hatan,
A dreuz founnus ar wenojen
Ewit furchal 'barz ar c'hlazen!

Pep tra a zeblant kat bue,
Ewit senti dimeus Doue,
Kaeran kentel ewit an den
Laket war an oll dreo da rent!

O den, digor 'ta da galon,
Ha lar, gant karante wirion;
D'ec'h, ma Doue, e kinnigan
Levenez ha poan an de-man!

An evnig a gav hep muzur,
Taken dour koulz ha magadur,
Roet d'in ive, ma Doue,
Dreist oll, magadur an ina.

Ha c'houi, Gwerchez, lilien bur,
Pellet diouzio pep kaihatur,
Ma miret epad an de-man,
Ha binnet ar re 'garan.

G. D.

CALANHEL

« Breuriez ar Brezoneg »

Setu aman ar vugale o deus roet o hanoioù 'vit
deski lenn brezoneg ha kaout lod er prijoù a vo
roet en Calanhel ar zul kentan a viz here.

Pôtrez. — Guillaume Fromentin, eus ar bourg,
hag Yves Le Gac, eus Gwerzoùil.

Merc'hed. — Maria Barbier, eus ar bourk;
Henriette Leunormant, eus La Roche; Léonie Le
Cam, eus ar bourg; Caroline Le Jan, eus ar
bourg; Françoise ha Maria Gueyvinou, eus Pen-
ar-Pont; Marie Tasset, eus Roujouaz; Marie Le
Denmat, eus Keresparz; Marie Carons, eus ar
bourg; Ambrosine ha Françoise Daniel, eus Ke-
raden; Louise L'Amis, eus ar bourg.

Ar vugale-man 'vo kaset d'e Kroat ar Vre-
toned 'vit man betek ar zul kentan a viz here.

Ma zo bugale-all c'hoaz hag a garje kemer lod
el lennadeg, n'int ket c'hoaz re zivezat da gas o
hano. Ma zo pôtrez vihan en Calanhel, e fell d'e
ive 'n em ziskoue.

E GWERZ PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (Dir-Na-Dor)

PRIZ:

5 real; ha 4 gwenneg ar fréjou-kas, da laret eo
nao gwenneg waraugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag heñ sinet
gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skri-
van reiz ha sklér ar brezoneg.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, bali Charner,
Sant-Briek.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNC

Le Gérant: F. GUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENERIEN

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An Aotrou TOSSELLIER, 27, ball Charner, a zigemer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Fennez An Gert.
Gant brezonek eo deuit ar feiz.
Gant ar galleg eo ar feiz.
Fennez An Gert.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vez. e ve Pec'het!
Muis.

GOUELIOU PLOUGASTEL

Piou e-touez hon lennerien na anavez ket Plougastel, bro ar reier, ar sivi, hag ar Vretoned kalonek, leal d'o yez, d'o gizioù fur ha kristen ha d'o gwiskamanchoù dispar? Plougastel eo bro c'hendik hon c'henlabourer Klaoda, en deus he zaolennet ker splann en e levr *Reier Plougastel* :

Plougastel abaoe pell 'zo
Eo gwella parrez tro-war-dro :
N'eus enni nemet tud a feiz,
A gar Doue, a gar o Breiz.

O, na kaer eo Plougastelliz,
Pa 'z eont d'ar pardonioù gant feiz,
Da welet sent o chapelioù,
Gant o dilhad a bep sort liou.

O Plougastel, bro ar sivi,
E donjanz Doue ra c'hoimi,
Gant d'ar feiz krenn ha kalonek,
O komz bepred ar brezonek !

Da zevel he gouel bloaziek en enor da Vreiz, *Kevedigez Breiz* n'halle ket, e gwirionez, kavout gwelloc'h eget ar c'horn-bro benniget-ze.

D'ar zadorn heure ar gevredelerien (regionalistes) a oa digouezet stank war aochou an Treiz. Ranket o devoa disken e Kerhuon ha mont war droad betek an Treiz, ha gwall-dristaet e oa bet o c'halonou o welet pegen divrezonekaet ec'h eo ar vugale er c'horn-bro-ze.

E keit m'em'an an tadou hag ar mammou, en o gwiskamanchoù Breiz, o kozeal etrezo yez ar Vro, ar vugale, dronkwisket gant gwiskamanchoù giz kear, ne deu eus o genou nemet gallegach. Mantus eo !

Ar gevredelerien a oe dic'haouet, a drugare Doue, kerkent ha m'o devoe taolet o zroad war donar santel Plougastel. Bravat digemer a oe graet d'e neuze ! Diredet e oa d'o diambrouk an aotro mear hag holl guzuilherien ti-kear, muzikerien Trezelide gant o rener an aotro Havas, eur varc'hegaded paotred yaouank war o c'hezeg rubanet, hag ar strollad (pe Komite) a oa bet karget da brienti an treo, en o fenn an aotrou Abere. Eun trugare ispisial a dleomp da laret d'an aotrou Abere evit an doare dispar ma'n deus prientet hag urzet pep tra, hag ouспен evit ar garantez en deus diskouezet ouzimp en eur rei bod d'hon rener en e di epad ar gonelioù.

E-touez ar prezegennou a zonedigez-vad a oe displeget pa zouaras al lestr, hini ebet na reas muioc'h a blijadur eget komzou brezonek an aotrou Thomas, an eil-vear. « Aman e Plougastel, emezan, e talc'homp bepred da garet hon mam-vro Breiz-Izel, gant he feiz, he gizioù mat, he gwiskamanchoù, he yez. Deut oc'h da rei dorn d'ar Vretoned da zerc'hel da spered ar vro. Gant se oc'h asur da gaout'ar gwella digemer e-touez Plougastelliz. »

Setu aman eun daolen verr eus ar bodadegou hag al labourioù pouezusan graet e deveziou kentan ar c'hendalc'h :

D'ar zadorn, d'an anderv, e oe digoret ar gouel gant eur brezegen vrezonek displeget dispar gant hon rener mat Ar Yeodet. Goude bean roet da Blougastel ha da Blougastelliz eur veulodi dleet, Ar Yeodet a zisklerias fraez mennadou *Kevedigez Breiz* : *Miret da Vreiz he spered breizad, he gizioù fur ha santel, he gwiskamanchoù ken kaer ha ken dereat* ha, dreist pep tra holl, *he yez vrezonek*.

Pegen don e skoas ar c'homzou-ze er c'halonou, her gwelet a rejod dre ar strakadegou dorn a responte d'e eus a bep korn ar zal, stank ha kalonek.

Klozet e oe an dalc'h kentan-man, goude eun nebeut kanaouennou ha prezegennou, gant ar *Bro goz va Zadou*.

An deiz war-lerc'h e oa sul, ha roet eo bet, evel na terec, da Zoue ha d'ar beden. D'an oferen bred e oe kanet gant unan eus dimezelled ar c'hendalc'h an *Anjelus* e brezoneg hag an o *salutaris*. Bravat ma 'z eo an ofisou e Plougastel gant al lidou hag ar c'hân reizet 'vel ne diut ket er c'haerion brasant ! Santout a reer ez eus e pen ar barrez beleien ken ampart ha ma'z int gouiziek ha santel.

En andervez pardon sant Klaoda a oa da veza. En hon Breiz-Treger hag ar bardonioù na weler ket siousaz, distreset gant ar gizioù nevez, enne kurioziteou a leiz, kezeg mezeven tronzusha, dreist-oll, trantelloù gant o evach milliget, o tistrei au dud diouz Doue hag ar befen ; ken e lavarfe an neu eman an dronk-spered o c'hoari e bôtr o kas mont a heligenta gant ar zant.

E Sant Klaoda, er c'hontrol, n'eus nemet frealz ha dud evit eur galon kristen ha breizad.

Netra bravoc'h na padennusoc'h eget ar broesion gant gwiskamanchoù ken kaer ar Vro. Eno em eus her santet splann : mar deo breur ha c'hoar ar brezoneg hag ar feiz, ez eo ivez ken stag all an dereadegaz santel ha gwiskamanchoù Breiz-Izel. Ar vraventez ané a denn da zevel ar spered hag a bouez da ober ma vo ar pardonioù *tra Doue* ha n'e ket tra ar bed hag ar plijadureziou.

D'al lun ez eus bet adstaget gant al labour.

Eur brezegen a zo bet displeget gant eur sene-dour, an aotrou Pichon, diwar-benn Brest, porz-mor al listri mordreizerien (transatlantiques), eun dra talvoudus kenan evit pinvidigez hag amzer da zont Breiz-Izel.

D'ar votadeg a oe graet goude-se, da henvel renerien *Kevedigez Breiz* evit ar bloaz a zeu, eur blijadur e oe d'omp gwelet hanoùou daou eus hon mignoned o tont eus ar voest. An aotrou Bosther a zo bet hanvet sekretour evit ar brezoneg, ha Gweltaz sekretour evit ar galleg.

Bodadeg an andervez a zo bet gwestlet pen-da-beun d'ar brezoneg, Klaoda en deus digoret ar c'hendalc'h dre lenn eun displegaden war ar brezoneg hag ar skolioù. Den na oa gouestoc'h eget Klaoda d'ober al labour-ze ha graet en deus anezan dispar. Fizianz am eus e vo moulet hepdale, d'an holl Vretoned da c'hallout ober o gonid anezan.

Goude e oe tro d'Ar Yeodet ha da Herriou da zisplega, ar c'hentan, doare *Breueriez ar Brezoneg*, hag an eil hini ar skolioù nos o deus savet e Treger hag e Gwened hag a zo, e gwirionez, eur vinnoc evit bugale Breiz. Evel hini Klaoda, o displegadennoù o deus skoet don war ar spe-

rejou. Ra zeuio ar re o deus o selaouet, da heuilha o skouer-vat, o rei dorn da gentelia ar vugale war ar yez ha war ar garantez-vro, rak eno eman amzer da zont Breiz-Izel.

Goude e oe laret gant an aotrou Ernault, eun nebeut gerioù diwar-benn *Emgleo ar skrivagnerien*. An aotrou abad Cardinal a zigoro e *Feiz ha Breiz* da ziskleriadennoù war ar poent-se, a zo a bouez vras, evel ouzoc'h, rak gant an emgleo eman an unvaniez hag hep unvaniez n'eus nerz ebet ha n'heller ket mont war-raok.

Ar vodadeg-man war ar brezoneg a zo deut da vad eus ar c'hentan. Leun e oa ar zal gant selaouerien, tud hanvet ha skrivagnerien vrudet a Leon an darnvuian ané. Fizianz 'zo e savo diwarni kalz a frouez evit ar brezoneg er skolioù, ar c'hentelia ar vugale, ha dreist-oll evit an unvaniez. Unvaniez a ra nerz !

Hon c'hazeten a zo re striz evit gallout lakat aman pen-da-ben kement a oe gret ha lavaret en deioù divezan ar gouel.

D'ar meurz, e oe gret eur valeaden da Landevenec, bro vinniget sant Gwenole ha binniget bepred, rak ar parkou a zo eus gwe leun a avalou. Eno e taoulinas barzed ha baleerien etouez relegou an amzer goz, ha pep-hini a lavaras eus a greiz e galon, eur beden da Zoue ha da zent koz Breiz-Izel.

D'ar merc'her, devez labour pen-da-ben. Komzet e oe eus Bretoned an Havr-Neve hag eus o ferson kalonek, an otro Nicolas, a oe kaset d'ean gourc'hemennoù ar Gevredigez, abalamour d'al labour breton a ra etouez hon c'henvroiz.

Loeiz Herriou, eus Gwened, a c'houllas ive ma teuje ar « sindikajoù » da rei prijou d'ar parouziou 'lec'h ma vije ar gwellan dalc'het an henchoù. D'abarde, braoan labour a oe lennet e oe hini an otro Gwentyvean, diwarben stad ar Brezoneg ha Spered ar Vro. Komz a reas eus eur vestrez-skol kristen eus enez Eusa hag a droas en brezoneg eur pezh galleg da c'hoari 'vit ar prijou.

Gourc'hemennoù a oe votet d'ei ha dleet e oa !

Ar yaou a oa de divezan ar gonelioù, hag an hini kaeran. D'ar beure a oa kanadeg evit gounit prijou, ha d'abarde, pezh-c'hoari, dansou breton, banvez. Ar pep talvoudusan e oa ar c'hanadeg etre strolladour pôtred yaouank hag ar pezh-c'hoari c'hoariet gant pôtred Sant-Vouga desket gant an otro Perrot.

Etouez ar bôtred pe ar merc'hed a glevis o kanan, ar re wellan e oe re Landivisio, ha gant ar re-ze ive ec'h eas ar priz kentan.

D'ar pezh e oa diredet eur mor a dud. *Dragon sant Paol*, bet c'hoariet dija meur a wech en Leon, a zo eun dolen gaer eus an amzer goz. Sant Paol a drec'h war ar baganed a gavas en hon bro hag a lak ane da zizrei ouz ar gwir Doue 'n eur lazau eun dragon hag a lake spont ha rivin er vro.

Ar c'hoarierien kelennet mat en em zibabas eus ar gwellan : Sant Paol, dreist-holl hag e vignon, ar « Gour-na-dec'h » a reas enor d'o c'hellenner, an otro Perrot.

Asambles gant ar pezh e oe gret gonel ar *bleun bruk*, eun neventi gouant savet c'hoaz gant an otro Perrot evel kalz a droe-all hag a ro lusk d'ar Brezoneg en Bro-Leon.

Goude ar pezh, e oe roet ar prijou d'ar varzed ha d'ar skrivagnerien kurunet evit o labourioù.

Ar zun a deu e vefont lakat aman, rak ar zun-man, n'e ket bolante vat, mes frankiz a-walc'h eo n'hon deus ket.

O TIZREI EUS PLOUGASTEL

O lenn en ti ma mignon Klaoda, en Landivizio, eul levr gret gant ar barz Leskour ha hanvet *Telen Rumengol*, e koueiz, er pajennoù diwean, war eun nebeut giriou hag a gavis a zo mat tre da vean embannet er mare-man.

Peadra 'zo enne da rei kalon, ha sklerijen ive, d'ar re a labour da rei d'ar Brezoneg stumm eur yez evel m'eo ar yezou-all.

Breman 'zo eun tri-ugent vla bennak, ar Brezoneg, komzet ha skrivet gant pep-hini evel ma kare, n'an evoa na stumm na neuz : e oa o vont da goll e hano a yez, hag ar Vretoned gantan, o vont da goll o hano mat a Vretoned, — rak pesort Bretoned e vefomp-ni ken pa ne vo ken komzet a vrezoneg yac'h ?

Pep skrivagner eta, pa skrive, a yee da heul e benn ; kazi 'vel eun enor e oa, zoken, skrivan dishenvel ar memes gir eus an eil pajen, ha, zoken, eus an eil frazen d'eben.

Ar giriou brezonek, d'ar mare-ze, a oa penna-dus ; hirie e vijent gwelet gant ar stumm-mau ha varc'hoaz gant eur stumm-all ; ar brezoneg a oa bemde chanj-dichanj evel an amzer, pe 'vel eur plac'h koant hag a blij d'ei lakat eur gwiskamant ter gwech an de.

Ar Brezoneg, avat, na oa bet koantoc'h a ze, o nan, ma Doue !

Eun drue oa, kentoc'h, gwelet anean, evel eur paour kez merzer etre skilloù e vourevien, dispennet, malet, brevet, bruznet. D'ar mare-ze, 'oa gwir lavaret en Breiz :

*Skrivagnerien,
Bourevien !*

A drugare Doue, pep tra a renk kaout eur fin. Merzerenti ar brezoneg na oa ket 'vit padout dalc'had. Eur vouez a oa klevet o sevel hag o lavaret : Trawalc'h eo ! Ar vouez-se oa mouez Ar Gonidec. Hennez a gemeras true ouz ar Brezoneg ; hennez a louzaouas e c'houlion, hennez a roas d'ean difennou, hag en em lakas e-unan dirakan, prest d'hen miret hiziviken, ouz e vourevien. Bennoz d'Ar Gonidec !

Gwir eo ar pez a zo skrivet war e ve, du-ze en Krong, tost d'ar mor ; hen an eus dasprenet ar Brezoneg. Ar peulvan a zo savet us d'ean na bado ket pell a-walc'h 'vit hen lavaret a rumm da rumm d'ar Vretoned o tremen.

Mes Ar Gonidec na oa ket e-unan. Spered ha kalon eun eskob breton a gavas da intent anean ha da heuilh e skouer hag e roudou. An otro Graveran, bet eskob en Kemper adalek ar bla 1840 betek ar bla 1855, ha Breton e-unan, p'eo gwir oa ganet en Krozon, a welas en nebeut amzer pebez talvoudegez an evoa labour Ar Gonidec. En e greden a Eskob,

*Ar Brezoneg hag ar Feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz,*

ha gwelet ar Brezoneg saotret ha dismantret gant Bretoned berbonellik, a re d'ean kalonad evel pa vije ar Fe hag ar Relijion a vije bet skoet.

Ne oe ket a-walc'h d'ean sonjal kement-se ; eun dra bennak a renke ober, ha petra ken, *nemet skrivan, pe ober skrivan herve doare Ar Gonidec ?* Ac'hane e teuas *Lizerou Breurez ar Fe*, skrivet ha moulet diwar reolennoù Ar Gonidec.

Lavaret e oa digemeret mat al labour-man, n'haller ket ; ar re oa kustum da skrivan ar Brezoneg 'vel ma karent, ar re o devoa 'vel plijadur o vourevian anean, ar re na garent heuilh na lezen na reolen ebet gant aon da gemer poan da blegan ha da studian, ar re-ze a zavas o mouez eneb an Eskob hag ar skrivagner Ar Gonidec, hag a lavaras ne oa ezom ebet da zenti oute, rak o reizan ar Brezoneg evel ma ve rsizet pep yez, e rent outan kalz a c'haou...

Lezet e oent da lavaret, ha hepred e oe kerzet war rök. Skouer an otro Graveran a dougas he freuz.

An otro 'n Eskob David, adalek ma oe hanvet en Sant-Briek, a deuas da zeski ar brezoneg. An otro Saint-Marc, arc'heskob Roañ ha kardinal, a bedas eur Breton, an otro 'n abad Herpin, da zont d'evan da zeski d'ean ar Brezoneg, 'vit gallout lenn oberou ar varzed hag ar skrivagnerien neve savet diwar dorn Ar Gonidec. Ya, kaer eo gwelet penôs e teuas spered Breiz da nerzan ha da vleunan er mare-ze, dal ma oe roet d'ean eur reolen ha lakat urz er yez vrezonek !

Endro d'an otro David, e savas eur bagad barzed, tud a ijin, tud a galon, tud a fe hag a zo da vean merket en aour o hanoioù warlerc'h re Ar Gonidec hag an eskibien vretou. Eman eta an otrone Juncour, *barz Plougover* ; Mercier, kure en Mael-Keraez ; Hingant, *barz sant Efflam* ; Kermaker, *barz Breiz* ; Henry, *barz an Aviel* ; Troude, *barz ar Vugale* ; Quémard, *barz sant Lauranz* ; Ar Yan, *barz Koad an-Noc* ; Milin, *barz Laouenan Breiz* ; Rannou, *barz Roc'h-Allaz* ; Ar Joubiou, eskob, *barz sant Gweneal* ; abad Clec'h, *barz Rungolven* ; Corentin Thomas, *barz Tour-tan* ; Prosper Proux, *barz Kerne* ; Hegarat, *barz Plouek* ; Leskour, *barz Itron-Varia-Rumengol* ; An Uhel, *barz Keramborn* ; Souvestre, *barz Mene-Hom* ; Breur Polycarp, *barz Plouian* ; Poullouec, *barz sant Gweneal* ; Karis, *barz Mene-Bre* ; Guitterel, *barz ar Blavez*, ha kalz a re-all. D'ar re-ze holl e skrive ArSkour, unan ane, ar c'homzou-man en e Delen Rumengol :

*Barzed yaouank, dalc'hit huel
Bepred baniel koz Breiz-Izel,
Banniel ar feiz hag an enor ;
Hennez eo baniel an Arvor.*

En o zonez, unan, an otro Guitterel a zo c'hoaz beo. Eun dudi eo evidomp, pan eo bet espernet d'hon c'helen, saludi anean en eur gemer eus e zorn ar reolen an eus bet heuilhet, 'vit he gwellaat c'hoaz hag he c'hreski.

Rak, mar deo gwir lavaret an eus bet gret Ar Gonidec hag e gousortet ar gammed kentan, an diesan hag ar pouezusan, c'hoaz e chom d'ober lies a gammed arök arruout e penn an ero. Da bep rumm tud Doue an eus roet e labour ; war ar men-font savet gant barzed ar c'hantved diwean, barzed ar c'hantved-man o devo ive o men da zigas ha da began. Pariz, 'vel ma lavarer, n'e ket bet gret en eun de ; mes ar Brezoneg ive, a fell d'ean meur a vlavez ha meur a grog arök bean peur'hret.

An eil krog, koulz lavaret, a zo d'imp-ni, skrivagnerien an amzer a-vreman. Ezom hon deus c'hoaz eus mui a unvaniez, eus mui a emgleo evit an doare-skrivan ; ezom a zo da binvidikat ar yez, en eur groui giriou neve, ha, dreist-holl, en eur glask hag en eur dibab ar giriou koz manet etouez ar bobl.

Ezom 'zo da skrivan kalz a levriou 'vit kas etouez ar bobl ar pez hon devo bet digantan. Ya, kalz a chom ganimp d'ober, ha kalz a chomo c'hoaz war hon lerc'h ; da vihanan, mar gallomp dibab ar gwellan d'ober evit an amzer vreman, hag hen ober gant unvaniez ha gant kalon, neuze ni lezo ive war hon lerc'h eun tam labour gret hag eur skouer vat.

DIR-NA-DOR.

AR C'HRISTEN

e Skol ar Skritur-Zakr hag ar skiant-vat diwarbenn ar Werc'hez Vari

Eun dra diskiantoc'h eo c'hoaz a-berz ar Brotestanted tamall d'ar Gristenien katolik azeuli ar mein, ar c'hoad, war digarez ma taoulinont gant doujanz dirak skeudennou ar Werc'hez, great gant mein pe gant koad. Skeudennou ar Werc'hez a zo dellezek a respet, hep mar ebet : benniget int bet gant an Iliz, hag ar respet, an enor a ziskouezer d'ezo a ya, betek Mari he-unan. N'eus forz pe war e zaoua ya, betek Mari he-unan. N'eus forz pe war e zaoua lin, pe en e za, pe azezet e ped ar c'hristen dirak skeudennou ar Werc'hez, ar c'hristen-ze 'neus

santimant ebet da azeuli ar Werc'hez, nag ar mein, ar c'hoad he diskouez d'e zaoulagad. Egwironieze, ne azeul ket muioc'h ar Werc'hez eget ne azeul eur c'hrouadur e vam pa en em laka war e zaoulin da c'houlen pardon diganti eus eun droug bennak en defe gret, pe da c'houlen eur vad bennak en defe ezom.

An enor a rentomp da vam Doue a ra enor da Zoue e-unan. Penôs an dra-ze ? Dre d'hell Doue nemet kaout mat, gwelet gant laouenedigez ar Gristenien o kemer skouer dioutan.

Eur wirionez merket sklear eo er Skritur-Zakr en deus Doue ha karet hag enoret ar Werc'hez. Sant Pol, er Skritur, a lavar d'an holl : *Hoc sentite in vobis quod et in Christo Jesu*, karit kement en deus an Aotrou Jezuz-Krist karet. War beden e vam Jezuz a ra e genta burzud en eun eured e Kana, er Galilee, en eur jench an dour e gwia. Arök mervel war ar groaz he ro d'an dud evit mam, *Ecce mater tua*. Lenn a reer er Skritur-Zakr penôs mam ar roue galloudus bras Salomon ar Fur, o veza deut eun deiz da welet he mab, ar roue a lakeas e vam da azeza en tu deou d'ezan hag a lavaras d'ez : *Goulennit, va mam, n'em eus netra da nac'h ouzoc'h*. Ar Werc'hez o veza pignet d'an neuv a zo ive lakeet da azeza war eun trôn da dosta da Zoue, ha Jezuz, he mab, goude beza sentet outi war an douar, en deus lavaret d'ez ive : *Goulennit, va mam, ar pez a gerot, n'em eus netra da nac'h ouzoc'h*. Eas eo d'ar C'hristen kompren eo he galloud en neuv ker bras ma ez eo henveloc'h ouz eur Vestrez hag a c'hourc'hemen, eget ouz eur zervichez hag a c'houlen. Evel ma lavar Sant Per Damien : « Mari, mam Doue, a virit hon respet hag hor c'harantez, dre ma'z eo hi ar zantela eus an holl grouadurien. Galloud he deus d'ober vad d'eomp dre ma'z eo *Mater omnipotentis*, mam d'an Hini en deus an holl c'halloud, ha bolantez he deus ive dre ma'z eo *Mater misericordiae*, ar vam leun a denereidigez hag a drugarez. » An devosion d'ar Werc'hez a zo ken koz hag ar relijion gristen he-unan. Gwelet a reer an Avielier sant Lukas, evit senti ouz meunoziou ar Gristenien genta, oc'h ober meur a skeuden eus ar Werc'hez. Sant Yan, o fellout d'ezan diskouez he c'haerder, he diskouez evel eur brinsez gant an heol evit mantel, al loar evit skabel hag ar stered evit kurunen. Ar Gristenien leal, a rum da rum, n'o deusket chanet d'he gervel meurbet eurus. Evit kement a zell ouz ar Werc'hez hag ouz an enor dleet d'ez, e c'heller lenn al levr kaer great gant an otroù Auguste Nicolas : *Etudes philosophiques sur la Sainte Vierge*. Kement gaou a lavar ar Brotestanted warbenn ar Werc'hez a zo displeget sklear ha pouezet mat. Eun den a renk uhel, goude beza lennet al levr-man gant ar brasa evez, a lavare d'an otroù Auguste Nicolas : « Goude beza lennet ho levr, n'heller mui chom protestant e giz ebet. »

KATOLI.

AR GER VILLIGET

GANT
LAOUÏK
(KENDALC'H)

I

— Ya, emean ; kenavo.

Ar goleier distank a led breman eur sklerijen drist dre ar ruio. Lein an tier uhel eu em goll eu denvalijen. A lec'h da lec'h, diarak eur stal a lugern hag a dispak hudurnez ar ru leun a fank, gant he zier louet gant ar moged.

Fanch a heuilh e hent hep taol ple da netra ha tristoc'h c'hoaz evit arök. Eus kement a zo endro d'ean e sav en e greiz eur rukun diremed ouz ar gër-ze, a guz kement a baourantezio hag he deus gret gant eun den leun a nerz hag a yec'hed ar paour kez ec'h e breman.

Komzo e genvroadez o deus piket anean ; santout a ra pegen gwirion ec'h e ar pez a lare ; gwelet skler a ra ec'h e hen a zo penn-kaoz d'an holl walenrio a bonez warnean hag e dud : penn-kaoz da glenved e bried, penn-kaoz d'ar poanio a c'houzant e vugale arök an oad, ha penn-kaoz ive

mar e henvel ouz eun den hanter kant v'l, ken brevet gant al labour ha devet gant an evach. True a ra d'ean e-unan; an dizesper a deu en e galon hag a wek anei evel gant eun dorn dir; pep tra a zebland d'ean ken pouius; ken dinerz en em gav ken e karfe mervel.

Allaz! e gorf a zo uzetoc'h c'hoaz. Nag e ve klanv ar c'horf, mar chom krenv ha ya'h ar galon, e ve fianz bepred ha stourmet betek an eur diwean; eur wech dinerzet ar galon, ne ve man d'ober ken. Hag he hini a zo ken gwàn, ken izel! Prezegenna ha skouerio fall o devoa he dizec'het, eur vne hep dalc'h na realen he deus he feura-chaet. Nan e ken gouest-eus an nebeut a volante a ve ezoni evit 'n em dennan eus ar fank ec'h e koueet, ha ze eo à lak an dizesper en e greiz.

— O ya! kaout a raje mervel, kaout an dizam eus e boanio!

Koulskoude, nan eus 'met an dud laosk ha digalon da c'hoantat ar maro. Ha neuze, aon an eus rak barnedigez ar Mestr na zervij ket 'boue pell amzer nemet e kred ennan bepred. Nan! red e bevan; evit ar re an eus ar garg dioute hag a zoug ar bec'h pouneran eus e follentezio; evit dic'haouan an droug an eus gret, 'vel a lare Soaz d'ean breman souden. Touet a ra na lako ken troad en ti eur marc'hadour gwin ha laret a ra d'ean e-unan:

« Nan, biken ken! meur a wech em eus hen touet, mes houman e ar wech diwean. Red e troc'han krenn pe 'c'h e kollet pep tra. »

Allaz! mar gouefe an den pegen simpl e teu da vean dirak ar sio fall en em ro d'e a greis e blijadur, pe veit krog mat ennan, e pellafe dioute evel diouz an tan! N'e ket eur zonj mat nag eur promesa gret en eur mare ma sav ar gonsianz he mouez a zovetaa anean. Henvel e ve ouz eun den koueet en eur fankigell : da bep krog a ra evit 'n em denn er-maez e tiskenn donoc'h; pe ouz eur c'hlanvour nan eus ken 'met kontel ar medesin a c'halfe e zovetaat... pe e gas war-eun d'ar bed-all.

(Da heuilh).

LAOUIK.

AR PROTESTANT HA SAKRAMANT An Nouen

Ar protestant a gouez gwal-glanv ha ministred e relijion n'o deus sakramant ebet da roi d'ezan. Mervel a renk ar paour keaz klanvour hep sikour na soulajamant abeurz ar relijion, hep Nouen na Sakramant! Ar Relijion protestant a ranker da anzavout a zo dinerz, dic'hallout, kriz en eur ar maro. Dont a ray marteze eur ministr betek ar c'hlanvour da lenn dirazan eur chabistr bennak eus ar Vibl; mes n'eo ket red d'an aotrou ministr en em zirenka evit se : n'eus fors piou, ar c'henta deuet mar deo bet er skol, a hell lenn koulz hag hen eur pennad eus levr ar Skritur-Zakr.

Ar vinstred protestant, kement a jolori hag a drabas ganto diwabenn ar Bibl, na zalc'hont kont ebet eus ar pezh a lavar ar Bibl da ober en-kenver ar c'hlanvour war e dremenvan. An Abostol sant Jakez a verk er Skritur-Zakr ar pezh a zo d'ober pa veze unan bennak gwal-glanv : « Klanv eo, emezan, unan bennak ac'hanooc'h? Ra vezo galvet beleien an iliz evit ma pedo ar re-ma evit ar c'hlanvour oc'h e frotta gant oleo, en hano an Aotrou Doue, hag ar beden-ze, great gant feiz, a zaveteio an hini klanv, ha Doue e zibonno. ha ma em a er stad a bec'bed, e bec'hejou a vezo pardonet d'ezan. » (Sant Jakez, v. 14. 15).

Komzou sant Jakez a zo merket e Bibl ar Brotestanted kerkoulz hag en hini ar re-all, perak ar vinstred na zentout ket outo? Ar veleien katolik hergrapa roont d'ar re glanv Sakramant an Nouen. Ar vinstred protestant na reont ket ze, abalamour emichanz ne blij ket ganto he ober. Eun dra anat eo e kemeront eus ar Vibl ar pezh a blij d'ezo ha lezel a reont a gostez ar pezh ne blij ket; mes n'eo ket aze kemer an hent da blijout da Zoue, da hellout beza digemeret mat gantan en eur ar maro. Krouet eo an den libr, mes hervez ma rafo e kavo.

TREZENY. -- Pardon

Salud, bro goant Treger,
Bro ar pardonioù kaer,
Bet a-viskoaz brudet,
Ha da viken meulet.

Gant ar giriou-ze e tigoran ar skrid-man diwarben ar pardon kaer a zo bet en Trezeny, ar zul an 20 a viz gwengolo.

Gant kalz a levezne e lavaran ar giriou-man.

Rak er pardonioù disteran,
'Ve ar pardonioù kaeran.

Aben ma oa sonet nao eur, an holl a oa war droad, Daoust petra a c'hedont? Gortoz a reont sonerien vihan Lezardre a deu da gaerat ar pardon.

Setu diou weturiad; arru int. Triouec'h a zo ane. Diskennet int er bourk, dindan renadir an otro 'n abad Gall, kure Lezardre. Pegen kaer n'int ket, gant o gwiskamanchou gwen! Diskouelet o deus evit petra 'oant deut da Drezeny, rak sonet o deus aròk antren er presbitor, evit laret d'ar bourkiz e oant arru, ha goude, eus ar presbitor d'an iliz, o deus sonet adarre. Kaer meurbed e oant da welet. Warben dek eur, koulz an oferen-bred, an iliz a oa leun-koueh. Meurbed e oa kempennet brao, eun dudi sellet ouz pep tra.

An oferen-bred a oe kanet gant an otro Gall, kure Lezardre.

Gret an eus, en oferen-bred, eur gaer a brezegen war deverion eun tad hag eur vam gristen en kenver o bugale. Laret an eus d'ezo sevel ane erfad, rak, emean, dious ma refet e kavfet, ha diouz ma hadfet e kutuilhet. Ha ze 'zo gwir.

Ar brezegen a zo et don en kalonou Trezeniz, a oa betek hen evel eur bobl ankoueet, hag a zo deut hirie da 'n em ziskouel dre ar c'haerder eus o fardon.

Meur a den koz an eus klevet o lavaret : Biskoaz pardon ken kaer na 'm eus gwelet aman. Biskoaz prezegren ken brao na 'm eus klevet, dreist-holl, gret gant eur beleg ken yaouank. Ya, an otro Gall a zo eur gwir brezeger, leun e galon a garante evit Doue ha Breiz.

Goude an oferen, ar zonerien vihan o deus sonet adarre eus an iliz d'ar presbitor, elec'h ma zo bet roet d'e eun digemer mat gant an otro person.

Deut eo koulz ar gousperou. Dre ma renke an otro Gall bean gant e zonerien vihan, an otro Raoult, person Kermaria-Sulard, a gemeras lec'h ar pardonner.

Goude ar gousperou, oe gret ar prosesion. Mes na kaeran da hini! Er peul aròk, e weled ar « gard National », ar pezh na ve ket gwelet en meur a barouz na nep lec'h ive, zoken, hag en pen ar « gard National » e oa daou bohr bihan 8 v'l, gwisket d'e pep a wiskamant « zouav », o tougen pep a drapo. Ar vugale-man a oa fentus ha brao da welet. Gant ar re-ze e oa troet sellou an dud ar muian. Goude, teus ar banniel bras, banniel sant Zeny, douget gant pòtred yaouank; goude, teus banniel ar Galon-Sakr douget ive gant pòtred yaouank; ne ve ket gwelet ar banniel-ze en meur a barouz, rak difennet eo bet, mes Trezeniz a zo dispart, ha rezou o deus. Warlerc'h e teus ar Werc'hez hag he banniel douget gant merc'hed gwisket kaer; pòtred vihan o tougen eul lestr, ha reo vihan-all o tougen pevar raou endro d'ar lestr, ha bugale ar barouz o tougen drapoioù, renkennet en daou du. Da glozan, e teus muzikerien bihan Lezardre son herdan m'hallent, renet gant an otro Gall, a zo evite evel eun tad. Eur hobl tud a heuilhe warlerc'h ken e oa sonezet Trezeniz, rak biskoaz n'o devoa gwelet kement-all a dud er pardon.

Gwelet am eus kalz a bardoniou evit ar bla, mes 'velkent, gant Trezeniz eo et al lore.

Achu ar prosesion, e oe gret salud ar Sakramant (meulet ra vezo!) An otrone Guegou ha Raoult, gloer yaouank, o deus kanet an *Tantum ergo* hag an *Adoremus*, da achui, war eun tou dispar. Eun dudi eo klevet o mouez dudius o sevel d'an nec'h evit kas da Zoue ar beden gaer-ze.

Pep tra a so gret dious ar c'henta, ha breman ne chom ganin da ober, nemet trugarekat, en hano person karet Trezeny, an otro Norman, hag en hano pardonioù Trezeny, kement hini an eus sikouret ober eur pardon ken kaer en eur barouz ken bihan, an otro Gall hag e zonerien, otro per-

son Kervaria, an otrone Guegou ha Raoult, abaded.

Trugare ive hag enor da berson karet Trezeny evit ar boan an eus kemeret da lidan eur pardon ken kaer. Me meus ar greden penos sant Zeny, diwar e dron alaouret en Nenvou, a dole eur zell a denerdigez war donar santel Trezeny hag a lavare c'hoaz evel gwechall:

Ma bugaligou ger, mibien feal d'o bro,
Hag a gurz c'hoas hirie war roudou o zado,
Kerzet, kerzet bepred war hent ar Baradoz,
Eno e vin ouz ho kortoz.

L. CHARHAN.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Taniou-gwall en Pariz. — Eun tan-gwall a zo o paouez bean devet en Pariz ar bureoion savet evit an telefon. Eus an elektrisite eo kroget an tan. Bean 'zo hanter-kant milion a goll. Ar bureoioù a oa d'ar gouarnamant.

— Eun tan-gwall-all a zo bet en eun ti-konverz bras hanvet « Ville Saint-Denis ». Kreñt rer eo eur butuner bennak an eus bet lakat an tan. Bean 'zo wardro daou vilion a goll.

Toulon, ar porz-mor milliget. — Eur c'hanol an eus straket adarre en Toulon war al lestr *Latouche-Tréville* ha lazet pemzek martolod. En o zoue, sionaz, e oa adarre Bretoned, unan eus *Peurit-ar-Roc'h*, Henry Philippe.

Setu hanoioù ar re-all. Dodellec, Braton, Leon Maout, Le Comte, Le Bail, A. Goulard, Danigo, Nogué, Gézard.

An nijerien. — Wilbur Wright an eus nijet en e veikanig epad eun eur hanter, kwit da zisken. Gantan eman ar maout breman evit ar bed holl.

Rouanez an Itali en Breiz. — Mam roue an Itali a zo deut da vale da Vreiz. Eo souj eman d'ober eun dro dre holl en eur wetur dre dan. Dimeurz diwean e oa en Roañn.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

GWENGAMP. — An avalou. — Meur a hostiz, elec'h prenan avalou eus ar vro, a ra breman digas d'e eus ar broioù-all, avalou ar vro o vean re ger. Kement-se 'n eus laket disken war ar prijon, disul diwean. An avalou a zo chomet endro da bevarzek real.

SANT-AGATHON. — Eur zoudard 'n em dapet. — Cottin, eus Sant-Agathon, kaporal er 48^e en Gwengamp, a oa disul, er gêr, endro d'eur goz fuzul. Esat a reas tennan ganti, mes ar fuzul a strakas etre e zaouarn. Renket e oe kas anean d'an hospital, gladet 'vel ma oa e vrec'h.

TREGLANVIZ. — Tapet gant eun aneval kezek. — Henriette Ferlicot, o vont eus a Dre-glanviz da Vousteru, a zo bet tapet war an hent gant eun aneval kezek stag ouz eur c'harr, hag an eus bet gwinket ganti. Tizet war hec'h ividik, ar wreg-man a goues hag e oe renket dougen anei d'an ti tostan. Bec'h he devo o 'n em gavout.

GOULENNIT E Ti-Mouleriz Sant-Gwilherm SANT-BRIEG, 27, ball Charner, SANT-BRIEG

An Avel katolik, gant an aotrou abad BILBY, gloenn karton ha skeudennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegren war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gweneg.
Hent ar Groaz.....	3 gweneg.
Bue sant Anton a Badou.....	8 —
Pedennoùigoù ha kelennadurez d'ar vugale.....	2 —
Merserent an Tad Perboar.....	1 —
Bue an Tad Perboar.....	1 —
Al lez.....	1 —
Moutdi al labourer.....	1 —
Gwez sant Milio.....	1 —
Gwez sant Koneri (skeudennet).....	1 —
An diaoul-paotr.....	1 —
Kân an Islande, Kentoc'h mervel. Peden ar varloleded. Gwez sant Kemo, hag all..... daou evit.	1 —

Eun diskenn war ar priz evit am eur hini.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deut da vale en Breiz

d'he c'hamaradez en Paris

(KENDALC'H)

Kerroziou, 25 a viz Gwengolo 1908.

Lusi gez,

Bet an eus da lizer. Re divezat e oa. Heman eo an driad de aboue em eus gret ar promesa nan ijen ken da Bariz... Nan, Lusi, da Dereza nan e ken da Bariz. Paris na welo ken Tereza, ha te 'vit he gwelet, a renko dont da Gerroziou, d'eur geraden distro pell pell eus pep trouz, ha n'eus hano anei nep lec'h war an douar.

— Penôs, emezout, ha gwir mat e ve kement-se? Dilezel Pariz evit Kerroziou? An dra-ze n'e ket kredabl... Bean bet o chom en Pariz, ar ger veur, ha mont da chom da Gerroziou!...

An dra a lak ac'hanon ma unan souezet awechou, Lusi.

Daoust hag ar gwenojennou bihan, an henchou goloet, ar gwe tih uhel, ar feunteun skler dindan korn ar c'heun, hag ar stang e barz ar gwe haleg, ar zaoud briz, ar c'hezek ru, an ti o tispakan moged e chiminal etouez deliou ar ween dero, an heol o sevel pe o vont da guz war lein an taroz mein ha brug, mouez ar potr-saoud o kanan, da zerr-noz, eur poz brezoned, hag an estig o respont d'ean a ziwar e glud etal ar waz, daoust ha kement-se holl an eve piket ma c'halon?...

Me wel ac'hanout oc'h ober eur c'hruz d'az gouskoad, klevet a ran ac'hanout o lavaret d'in: «Kaer a-walc'h eo ze, trokan Pariz, gant he faleziou, he meneiou aour, he muzik hag he brud 'vit eun ti plouz. eun taroz brug ha zôn eur pistik-laou; c'hoaz, da vilhanan, ma n'az tije ket dilezet da gerent ha da vignoned? Piou a gavi en Breiz-Izel, dindan da doennou plouz en korn ar parkou, e kichen an dud a welez aman? Penôs e ri te evit bevan etouez tud ha n'o deus nag anaoudegez, na deskadurez na gizioù speredek ha flour evel ma kavet aman gant da gerent ha da vignoned? »

— Ah! Lusi, n'houlfen ober poan ebet d'it; karet am eus ac'hanout ha da garet a ran bepred... Nan, n'eus ket man gizioù ha doareou ken flour hag en Pariz, mes lavaret e ve :

Toen blouz,

Kalon aour.

Pariz a dilezan, mes ne dilezan ket ma mignoned a zo en Pariz ; breman me o c'haro a la mode de Bretagne, ha te welo mar n'e ket dousoch bean karet evelse evit nan eo herve gizioù Pariz. Daoust hag eur plac'h yaouank, evit da vean et d'ar gouent, a gar nebeutoc'h a ze he zad, he mamm hag he mignonezed? Ne ra ket ; er c'hontrol eo ; o c'haret a ra gwelloc'h. Aman, Lusi gez,

Aman pell eus an trouz,

Hag holl safar ar bed,

me n'em gav 'vel en eur gouent, ha daoust m'az karan eus a-bell, az karan kalz gwelloc'h.

Perak e komz d'in 'n ez lizer eus ar mignon, emezout, a lezan ive en Pariz? Ya, plijadur am eus bet awechou o hentl da genderv, rak bean eo eur pôtr a fêson ; mes ne oamp ket gret an eil 'vit egile ; breman me hen gwel skler. Me ne oan ket gret 'vit Pariz, na 'vit eur Parizian. Ma c'horf 'zo bet ganet en Pariz, mes ma c'halon 'zo bet ganet en Breiz, epad an deioù biniget-man 'm eus santet ar garante o c'hennel enni.

Ne gomzan ket d'it eus Fanchig ; 'oun breman aman, en Kerroziou, en e kichen. Gret eo an dimezi etrezomp, gant otre ma zad.

Ma c'halon a zo leun a beuc'h hag a joa, o welet nag a dreo am eus kavet war an dro, eur priet, eur vro ha ganti eleiz a densoriou. En dimezi man, hen eo ar pinvidik ha me eo ar paour.

Gwir eo, arc'hant am eus da digas d'ean, mes petra eo an arc'hant a roin d'ean e kichen ar pez a ro hen d'in-me?

An enor hag ar joa da vean Bretoned, ha da hallout lavaret, pa welin eun iliz kaer eus ma bro : An iliz-se a zo d'in ; pa glevin eun ton kalonus : An ton-ze 'zo evidon ; pa welin an holl dreo ijinus ha kaer o deus gret ar Vretoned : An treo-ze holl a zo ma lod ; pa glevin hanvan ma fried, an hano-

ze ken breton ha ken enorus, an hano-ze a zo d'in ; an enor hag ar joa-ze n'eus netra war an douar, nag aour, nag arc'hant, na perlez, kaer a-walc'h 'vit e baen. Ya, rei a rez d'in da intent 'barz da lizer penôs ma fried a vo paour ha me a zo pinvidik? Nan, Lusi, me eo a zo paour ha ma fried a zo pinvidik. Me a dou davetan gant ma daou zorn noaz hag hen a deu d'am c'haout gant e zaouarn leun a valon. N'eus ket daou c'hant lurre, gwir eo ; mes bean 'n eus eul leze-all hag am oa kollet, siouaz evidon, leze an holl Vretoned a zo chomet en o Bro, paour koulz ha pinvidik, leze ar yez, ar gizioù, an istor, an ilizou kaer, ar c'hantikou hag ar gwerzioù, ar gwerzioù hag ar sonioù, al leze-ze hag a ra d'e bean gant o faourante pinvidikoc'h kalz euidomp-ni, divroidi, gant hon holl arc'hant.

Breman, te wel, Lusi, pelec'h eman ma zonzj ha pelec'h eman ma c'halon Pa vo gret hon eured, — hep dale e vo, — te deuo 'vel ar re-all, da danva ar zouben-leaz, da glevet son ar biniou ha da dansal an dans-tro, ha te welo neuze, gant da zaoulagad da-unan, pegen kaer ha pegen pinvidik eo ma bro Breiz-Izel.

Piou oar ma ne ri ket te evel don? Rak da vam ive a oa Bretoned.

War ar zonzj hag an esperans-ze ec'h achuan al lizer-man, an diwean, hag e pokañ d'it gant karanante eur gwir Vretoned.

TEREZA.

GOUELIOU Keltiek BREST

Hon lennerien o deus dalc'het sonj eus ar gouelioù keltiek a oa bet e Sant-Brieg eun nebeut bloavezioù a zo. Eus a Vreiz Bro-Zaoz pe Kambri e oa deut da Zant-Brieg barzed da adskoulma gant Breiz-Izeliz liamou ar gerentiez hag ar garantez-vro. Rak, evel ouzo'c'h, eus a Gambri eo e tenas hon tadon koz, o deus savet Breiz-Izel, pa rank-chont tec'hel rak ar Zaozon dindan renadur hon zant Breiz : Sant Brieg, sant Tugdual, sant Paol, hag all. Epad ma ranko eun darn tec'hel evel-se rak ar Zaozon, eun darn-all a gave gwarez e mezezioù Kambri.

O mibien, ar C'hambriz a vremen, o deus miret eno, divoulc'h a-rum-da-rum yez ha spered hon tadon. Hijaio eta, p'o deus an henchou-houarn hag al listri dre dan berraet kement ar peelderion, n'eo ket souez e teufe hon c'hendirdi dre ar gerentiez, hor c'henvroiz dre ar ouen hag ar yez, da dreiza ar mor d'adliamma anaoudegez hag unvaniez ganeomp.

E gouelioù Brest, evel e gouelioù Sant-Brieg, barzed Kambri ha barzed Breiz a zo en em gavet dorn-ha-dorn ha kalon-ouz-kalon. Gwelet a reot war pennad Dir-Na-Dor penaos e oa bet savet barzed Breiz-Izel, da heul reizidigez ar yez gant ar Gonidec, gant eun nebeut Breiziz kalonek, en o fenn an Aotrou Kermarker (pe La Villemarqué) hag an aotrone eskibien Graveran ha David. A-ben neuze ivez e oa bet diazezet an emgleo etre barzed Breiz-Izel ha re Kambri. An aotrou 'n eskob David en devoa, a-unan gant e vignoned a Vreiz, savet ar c'heutan gouelioù keltiek e Sant-Brieg er bloavez 1867 ; hag an Aotrou Kermarker, pedet gant Kambri d'o eisteddfod pe gouel Abergavenny, en devoa bet digante, en arouez a gen-garantiez hag a unvaniez, eur c'horn hirlas a zo miret c'hoaz e kastel e vab. Disket en devoa brezoned Tramor hag e skrivas, d'ar c'houlz-se, di-war-benn an emgleo, meur a lizer e kambraeg, a zo miret evel eun tenzor e levr di kastel Llanover e Breiz Tramor.

O tarempredi barzed Tramor barzed ar c'hantved-man na reont ken, evel ma welit, nemet derc'hel gant roudou barzed ar c'hantved diwezan hag o renerien vrudet, an aotrou Kermarker hag an aotrone eskibien Graveran ha David.

Hag an holl Vretoned her zant ervat, rak kerkent ha ma teu d'ez ar c'helou e vezo gouel bras ar varzed, barzed Breiz ha barzed Tramor unanet, e tiredont eus a bep korn ar vro.

E Brest, disul diwezan, e oa brasoc'h c'hoaz an engroez eget e gouelioù keltiek Sant-Brieg. Dre ma tremene strollad ar varzed e weled war riblennou ar ruioù, ouz ar fenestrou, ha betek war

an toannoù, selleriet stank-ha stank ha, pa oe digoret al lidou, e seblantas tachen ar Goursez 'vel eun enezennig glas e-kreiz eur mor heo a dud.

Brao-dispar e oe al lidou. An drouiz Calfan a Vro Gambia a rene ané gant Kaledvoulc'h, drouiz Breiz, en-dro d'e eur bagad barzed a Vreiz hag a Gambri gant o saeou gwer pe glas-mor.

Da gentan e oe adfroumet daou ran ar c'hleze 'vel arouez unanidigez an diou bobl goude eun hir-disparti. Embannet e oe ar peuc'h oc'h adkuzat en e ouin kleze Arzur, kanet e oe war an delen gant eur ganerez akwit a Gambri, ha graet prezeznou gant renerien ar Goursez. — « E gwirionez, eme Galedvoulc'h, eun dra hennak a nevez a zo savet war an douar, pa welomp kement a enor, a stad, hag a lidou, graet d'hon gouen ha d'hon brezoned ! » — « O tigouezout war douar Breiz, eme d'e dro drouiz Kambri, ec'h anavezomp hon bredeur gant o yez, o spered, o gizioù, henvel ouz hon re-iti. Fiziañz a zo e kerzo liviziken an diou bobl gwel-gwell, ouz en em harpa an eil war eben, war hent ar vuez hag an arakaat. » Taldir a lennas d'e dro eur varzoniez kaer : « N'ez eus ken a vor. »

Goude-ze e oe digemeret eur banniel eus ar brava hag a zo bet kinniget da Vreiz gant Kambri, broudet warnan gant bizid ampart merc'hed Kambri herminigou Breiz, a-unan gant arouez ar Goursez hag ar c'homzou-man a-zindan « kalon ouz kalon ».

E-touez ar varzed nevez-digemeret eur blijadur eo d'eomp henvel hon mignon ha kenlabourer ker, Eostig Kerinek. Hon gwella gourc'hennou d'ezan ! Graet en deus a-ziwar an dolven eur brezegeñ a voullimp aman ar zui a zeu, mar gal-lomp. Digemeret eo bet ivez, evel barz a enor, eun aotrou a dle Kroaz rei d'ezan eun trugare ispisial evit an digemer mat an deus bet ar vadelez da rei d'hon reuer koz, an aotrou doktor Piton an hini eo. Laret en deus ivez e brezoned eun nebeut komzou, o tiskouez n'ankoua ket e vro-c'henidik Sizun, bro an drouized gwechall-goz hag a zivvan enni breman Bretoned kalonek.

Klozet e oe ar gouel gant ar c'hlan Bro goz ma Zadou, kanet gant eur strollad bagale renet eus ar gwella gant an aotrou Gwilhermik.

An deiz war-lerc'h e rankjed kimiadi. An holl, avat, a dalc'ho pell ha don en o spered ar c'houn eus an deizioù-ze, hag a gemero diwarnne muioc'h a garantez c'hoaz ouz hon mam-Vro, ouz he yez hag he spered, muioc'h a galon hag a nerz d'o miret en o c'haerder ha d'o sevel kseroc'h ha gwelloc'h c'hoaz, en amzer da zont, gant skoazell Unvaniez ar Gelled. Unvaniez a ra nerz !

E GWERZ

PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (Dir-Na-Dor)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gwenneg ar frêjous-kas, da laret eo nao gwenneg warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag 'nen sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivvan reiz ha sklér ar brezoned.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, hali Charner, Sant-Brieg.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

E GWERZ : Grammsire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Briec. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broia keltiek.

RENERDUEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMBRANNOU-KONVERZ HA KOURBANANCHOU

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GRIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar galleg ez aio a Vreiz.
FURNEZ AN GRIZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezonus
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trechet.
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'hed d'
MILIN.

Priz Botrel. — Son enep ar vezventi : en brezo-
neg, 25 lur da Ab Sulliau; en galleg, 25 lur da
Desjardin, Roaon; Medalennou : G. de la Heupe-
rie; J. Heurtel, Roaon.

*Kozed a rejomp eur pennadig, ha goude 'n
em gvoitajomp. Hirie e teuan, diwar ar c'hom-
zou a oa bet etrezomp, da ginnig d'am mignon
ar pennad-man.*

Roll Rakprenerien " Bleuniou Yaouankiz "

Dastumaden soniou ha gwerzioù
gant AR YEODET

An abad Keranflech, Plourac'h.	1
An abad Beuzit, Logivy-Plougraz.	1
An abad Rolland, Plougraz.	1
Loeiz ar Rouz, Landreger.	1
An abad Godest, Plougouver.	1
Jehan de Guenyveau, Moncontant.	1
Ar markiz de la Moussaye, Lamballe.	1
Gab Liskildri, person Runau.	2
Pôtr Tiéouré, Kastell-Paol.	1
G. ar Rumeur « Mathaliz ».	1
An abad Bellom, person Lanmodez.	1
Ar Menn « Ar Pagan ».	1
Yves-Marie Le Corre, Kermaria.	1

ALI

Ar zun a deu e lakfomp aman toun :

CHOM EN BREIZ-IZEL

gant Ar Yeodet, het goulnennet gant mignoned
da Groaz ar Vretoned.

Pedi reomp bugale skol Karnoet hag eo neve
serret o skol da gas o chomaj, pa o adres, da E.
Ar Moal, 27, bali Charner, Sant-Briek.
'N em glevet etreze ha kas o adresou er memes
lizer.

GOUELIOU PLOUGASTEL AR PRIZIOU

Setu aman roll ar prizioù roet gant *Kevredigez
Breiz e-kerz gouelioù Plougastel.*

Gwerzioù. — Kentan priz : Bocher (Ar Yeodet),
10 skoad; 2. Ab Sulliau, Gouézec, 20 lur; 3.
Abad Bourser, eus Ploeren, 15 lur; 4. Adélaïde
Guillevic, Gwened, 15 lur; 5. J. Pessel, Brandé-
rion, 10 lur; 6. Y. Crocq, Brest, 10 lur; 7.
Pintik, Lesneven, 10 lur.

Sonioù. — 1. priz, Pintik, Lesneven, 30 lur;
2. Job en Drouz-Vor, Plouhinec (Morbihan), 20
lur; 3. Y. Crocq, Brest, 15 lur; 4. Ab Geneg,
Plouhinec (Morb.), 15 lur; 5. Merc'h-Arvor, Brest,
10 lur; 6. F. Gourvil, Montroulez, 10 lur; 7. G.
Le Bogue, Séglien, 10 lur; medalen : J.-M. Le
Gall, Sizun.

Pezioù-choari. — 1. priz, Abad Bayon, Bignan,
50 lur; 2. Y. Ar Moal, Coadout (C.-d.-N.), 30 lur;
3. Y. Crocq, 20 lur; medalennou : Job en Drouz-
Vor; abad Madec, Tiéflévenez; abad Bourser,
Ploeren; Louis Quééré, Plabennec.

Priz Gwec'hlan. — 1. priz, Ab Sulliau, 20 lur;
2. Marie Melliner, Languidic, 15 lur; 3. Louise
Melliner, Languidic, 15 lur; 4. Ab Geneg, 10 lur;
5. Eugénie Pessel, Brandérian, 10 lur; 6. Joseph
Pessel, Brandérian, 5 lur; Medalennou : Louis
Moller, Plouhinec; Maurice Ferracioli, Bodilis;
Pierre Guédès, Kastelin; Louis Herrou, Bodilis.

Priz ar skolioù. — 50 lur da skol Brandérian
(Morbihan)

Priz Herve Kerouartz. — (Bue Sant Melan) :
100 lur, d'al labour sinet *Une Bretonne de 18 ans.*

Priz de la Guichardière. — D'ar prezegennoù
brezoneg gret en 1907-1908 : 50 lur, Loeiz Herrieu.

Loden al labouriou dorn

Kant lur, d'an O. Toumelin, Gwened, 'vit eur
pez annez breton gret gantan en 1908. Medalen
arc'hant : Laurent Nicolas, 'vit e labour war de-
verioù ar parouzioù da harz an dud da gwilat o
bro. Medalen arem : Louis Quééré, Plabennec.

Medalennou a enor. — An O. n abad Clerc,
'vit e c'hrammadeg; Jos. Parker, Ar Fur, Itron
Moret, abad Havas, abad Perrot, Pôtréd Lomikel-
eu-Trez, Joseph Angot, Itron Tual, renerz skol
kristen Eusa.

Herminigou. — Kiniget d'ar re o deus laket
penzek den da zont en Kevredigez Breiz : Kont a
Salins, mer Hézo; Boudre, Gwened; Henri Guil-
levin, Gwened.

Lazioù-Kanan. — Kentan priz : Landivisiau,
60 lur; 2. Skol kristen Loperhet, 50 lur; 3. Tré-
zéfidé, 40 lur; 4. St-Vouga, 25 lur; 5. Kersaint,
20 lur; 6. Lannurvan, 20 lur; medalennou :
Loperhet, kaerrien Kersaint hag an dimezel Boi-
sanger a Lannurvan.

Sonioù kanet. — 1. priz, Dimezel Marianne
Hénaff, Bodilis, 20 lur; 2. Michel Gourvenec,
Kersaint, Plabennec, 15 lur; 3. Yvon Cloc, Brest,
10 lur; 4. Dimezel Catherine Guillerme, Loper-
het, 10 lur; 5. J.-M. Cam, Plabennec, 5 lur; 6.
Gouilven Pailler, Plabennec, 5 lur; menek : Guil-
laume Léon, Keraz.

Diskouezadeh labouriou dorn. — Medalen gen-
tan, an Otrone Ely-Monbet ha Henriot; 2. an
Itronnez de l'Ecluse ha Le Marié. Medalen ar-
c'hant, Jos Parker; J. Choleau; Yves Hernot.
Menek : Colomby, Landerneau; Joseph Billaut,
Kergoff.

Priz an tiegesioù. — 1. priz, 30 lur ha meda-
len a enor : Vincent Cohat, labourer en Kertho-
mas (12 a vugale); 2. priz, 20 lur da Jean Guédès,
devejour en Keraval (8 a vugale); 3. priz, 10 lur,
Guilherm Kerdraon, micherour en Brest (8 a vu-
gale).

Priz ar gwiskamanchoù. — Pôtréd : 1. priz,
15 lur, J. Mathurin, Plougast; 2. 10 lur, Gabriel
Gourmelon; 3. 5 lur, André Laurent; 4. 5 lur,
François Thomas; 5. 5 lur, François Bihan, St-
Urban; 6. 5 lur, J. Le Moal, Plougastel; 7. 5
lur, J. Maléjacq; 8. 5 lur A. Maléjacq.

Merc'hed : 1. priz, 20 lur, J. Grigoù, Loper-
het; 2. 15 lur, Mme Surzur, Plougastel; 3. 10
lur, Marie Salain, St-Vouga; 4. 10 lur, M. A. Le
Hénaff, Bodilis; 5. 10 lur, Jeanne Milin, St-
Vouga; 6. 5 lur, M. Yvonne, Landerne; 7. M.-J.
Gueneguen, St-Vouga; 8. J. Olivier; 9. Le Bot,
St-Urbain; 10. F. Guillerme, Yrvillac; 11. Maria
Gourmelon, Plougastel; 12. Cat. Guillerme,
Yrvillac.

Bugale : 1. priz, 20 lur, Fr. ha J. Le Gal, Plougastel;
2. 15 lur, Joseph Nicol ha Nelly Goex; 3.
15 lur, J. ha M. Dilasser; 4. 10 lur, Cat. Bran-
qui ha Jean Kervella; 5. Marie Jacques ha La-
marque.

Bugale vihan : Jean Pol.
Dre vodad : Priz da vodad Loperhet.

PENOS 'N EM GLEVET ?

*N'eus nemet eiz de 'n em gavis gant eur mi-
gnon, eun den kalonek hag a glask ar vad a greiz
e galon; hag hen o lavaret d'in-me : « Ar pez
'zo ar gwasan eo n'omp ket, ni, Kristenien, 'vit
arruout da 'n em glevet etrezomp. Koulshoude
red 'vije 'n em glevet 'vit rei eun tol skubelen
d'ar franmasoned! »*

N'eus ket kaeroc'h tra 'vit gwelet an dud o 'n
em glevet. An emgleo, ouspenn ma 'z eo eun dra
gaer, a zo eun dra red 'vit kerzet war rôk ha harz
da vean gwasket.

Ar pez 'zo kaoz ne gerz ket war rôk ar relijion
en hon zonez; ar pez 'zo kiriek ne gerz ket war
rôk hon bro Breiz, eo dra 'n em glev ket ar
gatoliked etreze, dre 'n en em glev ket ar Vre-
toned etreze.

An dra-man a zo skler evel an heol da greiste.
Perak n'en em glevet ket? Penos 'n em glevet?
Setu aman hag a zo startoc'h da zisklerian, ha,
koulshoude, eur gir hepken a respont d'an diou
c'houlenn :

*N'en em glevet ket, dre n'e ket ar Wirione
doun a-walc'h en trawalc'h a sperejou.*

*N'e ket doun a-walc'h; da laret eo, n'e ket et
betek gwrien ar sperez hag ar galon, e doare ma
teufe da drec'hi, en diabarz an den, ha da vean
mestrez warnean ha war e volante.*

*N'e ket et doun a-walc'h en trawalc'h a spe-
rejou.*

N'e ket a-walc'h d'ar Wirione bean trec'h en
diabarz eun den, daon den, kant den, red eo d'ei
bean trec'h en trawalc'h a dud 'vit ma vo ganti ar
c'hrenv 'barz ar vro. Ha neuze? Neuze, 'vel anean
e-unan, vo gret an emgleo pa vo gomet al loden
eus an dud gant ar memes gwirione, rak uan eus
nemet unan.

Neuze ta, ar pez 'zo kaoz n'en em glevet ket eo
dre n'e ket ar Wirione doun a-walc'h en trawalc'h
a sperejou; neuze 'ta, an tu da 'n em glevet eo
lakat ar Wirione da vont doun a-walc'h en tra-
walc'h a sperejou.

Mes breunan, perak n'e ket ar Wirione doun a-
walc'h en trawalc'h a sperejou?

Abalamour n'ouveer ket mat, petra eo ar Wi-
rione.

Hirie 'zo diou c'hiz da 'n em gompren er Wi-
rione. Eur rumm tud a zo hag a lavar : Ar Wi-
rione a ya hag a deu, herve ma chanj sperez an
dud, ar Wirione a zo e lec'h e tenn c'hoantegezioù
an dud, o youl, o fantazi.

Eur rumm-all a zo hag a lavar; Ar Wirione na
aparchant ket ouz an dud; ar Wirione a oa arôk
an dud, hag an dud a dle stumman o sperez
warni. Sperez, fantazi an dud na ket ar Wi-
rione; he c'havout a hall ober, mes n'hall ket he
c'hroui. Ar Wirione n'eman ket dalc'had e lec'h
e tenn c'hoantegezioù an dud, rak an dud, forz
pegen uiverus e vefent o laret eun dra, a hall 'n
em dromplan, da lavaret eo, skei a-goste alies ha
tremen ebioù d'ar Wirione.

Penos neuze klask ar Wirione? Ar rumm ken-
tan a respont adarre : klaskomp en hon diabarz ar
pez a blijfe d'imp, ar pez hon dije c'hoant a vije,
ha ze eo ar Wirione, dreist-holl, mar 'zo kalz a
re-all oc'h asanti ganimp.

An eil rumm a lavar : 'Vit klask ar Wirione, eo
red d'imp mont a-ziaev d'hon sperez ha d'hon
fantazi. Red eo d'imp, gant ar sperez-se, evel
gant eur benveg, tennan ar Wirione eus ar pez a
zo hag a dremen bemde dirak hon daoulagad, 'vel
ma tenn al labourer e vara eus an douar.

Eaz eo gwelet penos an eil rummad a gomz ar
gwellañ, rak ma vije ar Wirione eun dra hag a
aparchantfe hepken ouz hon sperejou, e vije
bemde, pe, da vihanau, da hep hanter-kant via,
kant via, o chanj hag o vont eus an eil amzer
d'eben, enep d'ei he-unan, diouz ma vije troet
sperejou an dud.

AR BREZONEG ER SKOLIOU

Ar Brezoneg a enori
Ha dreist pep yez-all a gari.

... Ar vistri-skol n'o doa ezom ebet da veza dougel gant ar pennou bras da argas ar brezoneg diouz ar skolioù, kousto pe gousto... Kaout a ra d'ezo eo diasoù deskri ar galleg da vugale hag a oar eur yez-all. Hag i ha mont e brezel eneb ar pez a hañvont ar « patois », pe briz yez. « Netra, emezo, nemet ar maro-evilant! » Sionaz! kalz a Vretoned diaviz o deus lavaret evelto...

Iskis eo, va c'henvroiz ker, poanuis meurbed eo d'eur gwir-Vreizad lakaat e spered da zoujal en holl draou a zo bet kavet evit rei taol ar maro d'hon yez ker!

Benveg ar brezel a zo peurvuia eun tamm metal, eur ruilh, pe n'eus fors petra-all, a vez roet d'eur bugel a glever o koms brezoneg, pe e portz ar skol, pe war an henchou, pe zoben er gear. Heman a ro anezan d'eun all pa glev gantan brezoneg, ha pa ne ve 'met eur ger hepken. Hag evelse eus an eil d'egile. An hini diveza a zigaso ar « vioc'h » d'ar mestr, hennez eo, ar paour keaz paotr! a baeo evitant hag evit ar re-all!

Hag e tesker evel-se d'ar vugale dont da veza spierien. N'eo ket brao mont da zellet ha da zelaou dre doull an alc'honez! N'eo ket kaeroc'h mont a-dreñv kein an dud da spia o c'homzou!

Mez eo klevet baeo eus eur seurt traou! Ha lavaret c'hoaz emaoep en eur vro e kaver enni ar ger LIBERTE skrivet e lizerennou bras war an holl vegerioù! Sionaz! re alies n'he c'haver nemet eno!

Ar vistri-skol a lavar: « Re a anzer a rankomp da implija gant ar vugale a deu d'ar skol hep gouzout tamm galleg! » Poan hoc'h eus? Kredi a ran ac'hanoc'h. Kredit ac'hanou d'ho tro! Eun ali a zo mat da gaout. Easoù e vije d'eoù, ma karjec'h implija ar yez a oar ar vugale evit deskri d'ezo an hini n'ouzout ket. Eno eman an dalc'h.

An doare-ze eo an hini a gemerer dalc'hamad evit deskri ar yezou-all. Ha ze, klevit mat, a zo hervez ar furnez, ar reiz hag ar skiant, p'eo gwir e lakaer da dalvezout ar pez a oar ar bugel evit deskri d'ezan, a-nebeudou, ar pez na oar ket c'hoaz.

O teski ar galleg d'eur bugel dre zikour ar brezoneg e tispleger d'ezan ar gerioù gallek ha n'ana-vez ket c'hoaz er brezoneg a oar mat a-walc'h. Dont a reer neuze, evel pa lavarfen, da imbouda, da « c'hrefi » yez Franz war yez Breiz, ar galleg war ar brezoneg, goustadik, hep poan, en hevelep doare m'eo eur blijadur evit ar bugel.

Er bugelig a deu d'ar skol ez eus eur spered; gouzout a ra eur bern traou, evitant da veza yaou-ank: eun dudi eo klevet anezan o varvailhat gant e vignoned.

Setu, eman deuet eta, hervez ar c'hiz a zo brema, ar mestr a ro e gentel e galleg, hag ar paour keaz Breton bihan a zo eno digor bras gantan e zaou- lagad hag .. e c'hinou: gwelet a ra, klevet a ra ive, ha koulskoude, kaer en deus, ne c'hell kompren netra. Ar mestr-skol pennek a ra d'ezan evel pa oniche galleg mat...

Ha neuze, petra c'hoarvez peurvuia? ar bugelig a deu buan da inoui; ne gav saour ebet gant skol c'hallek ar mestr. E spered a nij d'ar gear, da gaout e vamm, e vreudeur, e c'hoarezed, hag ec'h en em ro da onela...

Komzit brezoneg outan, e dal a ziroufenno, sevel a ray warnoc'h e zaoulagadigou lent, hag hepdale e welot ar mousc'hoaz o tarza war e vuzellou. Goulennit outan hanoioù an traou en e yez; goulennit-i ive digantan e galleg, ha ma n'o goar ket, livirit anezo d'ezan. Hag evel-se e tesko. Evel-se e lakeot da dalvezout ar pez a oar ar bugel evit deskri ar pez na oar ket c'hoaz.

Diyezatoc'h, pa vezo brasoc'hik, p'eu devezo desket eun toulladig brao a c'herioù gallek, roit d'ezan kentelioù berr da drei e galleg.

Netra gwelloc'h, va c'henvroiz ker, evit deskri eur yez, eget trei ar yez a ouzer er yez emae o teski. Goulennit digant ar re o deus great o studi er skolioù bras, e Kemper, e Kastel, e Lesneven,

goulennit digante penaos ec'h en em gemere ar vistri evit deskri d'ezo al latin, ar gregaj, ar saoneg hag ar yezou-all.

Lavaret a raint d'eoù eo oc'h ober troidigezioù eus ar galleg a ouient el latin, er gregaj, pe er saoneg, edont o teski.

Perak ne reer ket evit ar paour er skolioù bihan ar pez ar reer evit ar pinvidig er skolioù bras?

Perak ne fell ket d'ar vistri implija ar brezoneg evit deskri ar galleg d'ar vugale, evel ma c'h implijer ar galleg evit deskri ar yezou-all?

En Aljeri, er Provanz, e Kambri, e Madagaskar, ... e reer an doare-ze. Ha perak n'her greer let e Breiz-Izel? Daoust hag aon a zo e c'houfe ar vugale vreton dion yez? Lavaret a reer e talo daou zen an nep a oar dion yez... Ac'hanta! Ar Vretoned a zesk ar galleg dre zikour ar brezoneg a oar kalz gwelloc'h galleg eget l'ransizien diwar ar meaz ha n'hellont morse, kaer o deus, en em zizober mat a-walc'h eus o briz-yez. Ha setu perak n'eus ket eur gwir Vreton ha na c'houlen a-greiz kalon gwelet ober implij eus ar brezoneg er skolioù evit braza mad e genvroiz.

Klevit ha klevit mat eur wech muioc'h, c'houi tud diwar ar meaz, honnez eo an doare wella da zesk galleg mat, an esa hag an difrea.

En anv Doue! arabat eo d'eoù eta beza oc'h hirvoudi: oc'h en em jala, o kunudi, abalamour ma lavar ho paotr eur gomz vrezonek bennak war borz ar skol, pe abalamour ma vez brezoneg a-wechou gant ar mestr-skol!... Lod a gav d'ezo eo kollet pep tra ma n'eus ket dalc'hamad eur « vioc'h » pe eur « simbol » o vont a zourn da zourn gant bugal ar skol!... Diotachou, e gwirionez, hag a ra poan koulskoude da dud a zo.

Gwelloc'h e vije d'ar goueried-se mont da gaout ar vistri-skol da c'houlen diganto deskri ar galleg d'o bugale dre ar brezoneg, hag evel-se e tiskouezchent o furnez...

Pegouls e vezo desket d'ar Vretoned lenn ha skriva en o yez?

Dihunomp pelloc'h... ha deomp war-raok!

KLAODA'R PRAT.

(Pluencir).

DIZOURS I

A-us d'eur wazig dour,
Eun evn ar c'hoantan,
Pignet war veg eur skour,
'Gane 'kerz an han.

An heol a lurgerne
E krech an oablou,
E keit ma tregerne
Ar c'hoad gant kaniou!

Kaniou eur mesaer
E disheol ar gwe,
Kustum er prajeier
Da vean bemde!

Eun tammig ezen flour
Lake ar brankou
Da lijan 'us d'an dour
Hag 'us d'ar bleunioù.

Ar mesaer bihan,
O welet an evn
Luskellet 'pad e gan,
Eas d'eun ez-eün.

« Pignet war an derven,
O evnig bihan,
Ken koant da c'hong meleo,
N'e teus ket a doan.

« E teufe an awel
Da derri ar brank,
Ha d'it neuze mervel.
Te c'hoaz ken yaouank?

« Ma 'teufe d'it kouean
Ebarz dour ar waz
Ken don el lec'hig-man,
'Ves beuet, sionaz!

— « Kwik! kwik, o mesaer,
N' em eus doan ebet,
Me zavfe prim en er,
Eun dour 'gouefen ket!...

« Doue d'imp 'n eus roet
D'houaskel 'wit so;
War ar brank luskellet,
On dizoursi tre!

« Ma tor, ma a nijo
War eur skour krenvoc'h,
War bini ma gano,
Mar gallan, gwelloc'h. »

G. D.

An den yaouank hag an den koz

Eun den yaouank dronk-laouen ouz e stad
En em glemme eus e Grouer dalc'h-mad:
« Doue, emean, a ra vad d' em nesa,
« Mes d'in-me! N'eus morse roet netra. »
Eun den koz-koz o klevet e gomzou,
A ra d'ezan da glevet kentelioù:
« Ha ken koz-tra out ha ma lavares?
« Doue 'nefe roet vad d'it jemes?
« N'e teus-te ket bet yec'hed ha yaouankiz?
— « Ne lavaran ket nan e nerz giz;
« Gant-se memes em eus nerz ha kened,
« Kement ha ma ho peus-c'houi dilezet. »
An den koz, o kregi en e zorn deou,
A ra outan goustadig kelennoù:
« Ha koutant vez, 'vit mil lur, ve trouc'het,
« An dorn deou-ma raktal ma vint roet?
— « Koll an dorn-ze ne asantiu ket sur!
— « Hag an dorn kleiz neuze, evit ped lur?
— « Ha pa vez 'vit eur mifurig oupen,
« Ma dornig kleiz na roin ket biken. »
— « Mes, koutant ves da goll da zaoulagad,
« Evit dek mil lur aour en eur yalc'had? »
— « O! Doue ra viro! E priz ebet,
« Lagad ebet d'in-me na vo troket. »
— « Gwel eta pelloc'h, eme an den koz,
« E tamalles, sionaz! Doue e faoz:
« Kalz vad a deu d'it digantan bemdez,
« Hag outan, dianaoudek, en em glemmez! »

J. C.

Labour ar Gevren Espernek

Bezan hon deus ar blijadur da lakat dirak daoulagad hon lennerien eun darn eus prezegen an Aotro Morvran Goblet, rener *Kevren espernek* (Section économique) *Kevredigez Broadel Breiz*. Kement-man a ziskoueze d'hon lennerien peoùs K. B. B. n'eo ket hepken eur vodadeg tud ha na glaskont nemet kana ha bale; bezan eo eur vodadeg tud hag a glask, en kement stum a zo, adsevel hon Breiz en kaerder, en pinvidigez ha gwellaat stad an holl Vretoned dre ar madelezoù roet d'hon Bro gant ar C'hrouer...

AR YEODET.

Ar *Gevren Espernek* a laka he holl boan da greski madou Breiz ha, da genta, al labour-douar. Hon douar n'eo ket eun douar seac'h ha difrouez, mad hepken, gant he lann alaouret, da rei danvez da goz rimadellou gallek diwar-benn Breiz-Izel. Eur vammenn vuzudus a vadou eo evit ar Vretoned. Hogen, red eo d'eomp dibab ervat hor gouidegezioù (cultures), digemer ar gwellaennou evit al labour-douar, gwellaat hor gouennou chatal, kreski, dreist-holl, al leazerez (laiterie), adkoda hor menezioù.

Hor micherioù koz evel *labour al lien*, an *annez hizellet*, al *listri livet*, a zo bet brudet dre ar bed-holl. Kalz a vicherourien ampart hon eus c'hoaz. An holl her goar, ar brenerien a zo skuiz gant ar c'hoz varc'hadourezioù teusk graet gant an ijenerere a vremen. Gallout a reomp eta kaout eur adc'he- nedigez evit hon ijinoù-tiegezh (industries familiales). Ne vezint ket pell evit beza brudet adarre. Gwechall ez ea mad konverz Breiz-Izel. Gallout a ra bevaat adarre, mar karomp, mar gouzomp ober hor mad gant hon henchou, gwellaat hon henchou-houarn, tenna ar zellou war hor porzioù-mor, ar re gaera hag a re wella diazezet eus an Europ.

Perak e chom ann traou holl ja ober hizio? Dre ma kredomp atao ez eo Gouarnamant Pariz a dle beza hor Zalver. Ac'hanta, tud Pariz o deus diskonezet d'eomp ne oa netra da c'hortoz diganto evit Breiz-Izel. Paouezet hon deus da veza Bretoned, dre m'hon deus klasket beza lenvel onto.

Hon parkaeer hon deus kuitaet evid mont da vervel gant an naon en o c'heariou. Eus artisaned ma oamp gwechall, ez omp deuet da veza devezourien en o labouradegoù. An divroa en deus lazet hor mibien, dizenoret hor merc'hed, peur-gollet hor bro.

Tremen mall eo stourm ouz ar walen-ze; war-c'hoaz e vezo re ziwerez. Hogen evit-se, n'eo ket red hepken labourat hervez ar furnez da ren hor madou; red eo labourat dreist-holl hervez hor spered breizad.

Paoureet ez omp het gant an divrazonekaat, kentoc'h eget gant ar giziou-labour fall, chomet re war-dreñv.

Kevedigez Broadel Breiz a labour da zerc'hel 'n o zav ar spered breton, ar yez vrezonek, ha giziou ar Vretoned. Ar *Gouren Espernek* a glask pinvidikaat Breiz-Izel, evel m'her gwelot bremaik en eur zelaou prezegenñ hor Sekretour, ha sklaer eo ne c'hell ket Breiz dont da veza pinvidik, ma ne chom ket he mibien gwiñ-Vreiz. Kement a vezo great a hend-all a zeuz da fall.

Rak Breiz hepken a c'hall rei magadur d'hor spered ha d'hor c'horf. Ar Varzed a lavar d'eomp : « Chomit Breiziz ha chomit e Breiz-Izel, evit beza mad, poellek ha krenv. » An Esperneien a lavar ospenn : « Chomit Breiziz ha chomit e Breiz-Izel, evit beza eurus hag evit dont da veza pinvidik ! »

Y.-M. GOBLET.

AR GER VILLIGET

GANT

LAOUIK

(KENDALC'H)

I

Fanch e ch' e bet dihunet e gonsianz gant ar c'homzo an eus klevet; pa ch' e diskennet eunan e-unan ha santet pegen gwriennet e ch' e e si en e galon, an eus 'n em roet d'an dizesper; 'met henvel ouz an oll dud laosk, e teu hep dale ken prim war an tu-all hag e tou chench bue : tonadenno evelse a ve klevet beude en geno ar gwasan lamponed ha ze na ra ket d'e dilezel o bue diroll. Hen an eus ar c'hoant da dizrei war ar rouden val 'met ne wel ket Petra a fellfe d'ean ober evit arrount eno pe mar gra, e fiz re en e nerz hag e kono primoc'h a ze adarre.

Digouet tost d'an ijinerez, en eur dremen ouz toul dor eur marc'hador gwinn, en em gav dirak tri pe bevar micherour achu gante o devez hag a anave mat evit bean skarzet meur a voutailhad en o c'hompagnunez. O fenno ru hag o daoulagad benet a diskoue n'emaint ket oc'h evan o baunac'h kentan.

— Sel! 'te 'zo o vont aze, Fanch? Deus da lipat eun daken. Amzer a teus c'hoaz.

— N'em eus ket, emean; an eur a zo arru.

Hag e telc'has da gerzet.

— Deus! sel nag a ardo! eun abaden-c'hoari a reomp pe 'man Nedeleg hag e renki kaout da lod.

Ha daou ane o kregi en e zivrec'h hag o stlejal anean en hostaleri. Pa oa Fanch o vond en ti, e kleve diou vouez en e greiz hag unan a lare :

« Evit evan eur bannac'h, Petra e zis? Rak tal e tec'hi en dro ha ze na rey ket dilezel da brome-saou. »

Hag eben a lare :

« Mar ges aze e ch' out kollet! tec'h prim hep sellet war da lerc'h. »

Allaz! an hini gentan a oa ar grenvan. Ar gaoz a oa sart etre ar bôtrad; Fanch na lare gir rak eun tam anken a oa chomet en e greiz ouz ar pez a re. Setu unan, eur Breton ive, hag o c'houlenn digantan :

— Trist out Fanch, nan a ket da bried tam gwelloc'h?

— Tam ebet, emean, e zram o tenvalaat.

— Ba! perak ober gwad fall, eme eun all; jach war da wesen Fanch, ha bez dinec'h : ne vo ket maro mat honnez ma kavi diou prest da gemer he flas; n'e ket merc'hed a vanko d'it biken.

— Ro peoc'h, Reyman, ro peoc'h : n'ouzout ket Petra larez.

Ha Fanch o lezel e wesen leun war an daol hag o vont er-maez. E genvroad ac'h aes war e lerc'h.

— N'es ket a-kwit evelse, emean, evit farsal an eus laret kement-se.

— Farserez, Per, ar re-za a wel farserez dre-oll, ar re-ze n'o deus ket a galon! Mez a reont d'in ha mez am eus ouzin, me ma-unan, rak nan on 'met eur gwaleurus. Kae d'ar ger, Per, ha lez ane; sent ouzin, da wreg ha da vugale a zo ouz da c'hortoz.

Hag hen o tec'hel. Egile a chomas en e zav da zellet anean o vont kwit. Pac'h aes en ijinerez e tizroas en hostaleri; e vignoned a oa o c'hoarzin diwar goust Fanch.

— Gwir a-walc'h a lare, a zoujas, n'o deus ket a galon.

Skarzan a raes e wesen hag e tec'has ive.

Pa digoueze Fanch 'tec'h ma vije galvet ar vicherourien evit al labour noz, ar c'hontervestr a oa o paouez serri e leor.

— Iskuzet ac'hanon otro, emean, eun tammig ec'h on diweat, 'met setu me prest da gemer ma labour.

— Na gemerfet ket ho labour, Madek, rak eun all a zo en ho plas. Setu an derved gwech e tigouet aman ar miz-man krak-veo ha re diweat; micherourien fall eveldoc'h nan eus mann da gontan warne; tremenet eta war-c'hoaz ar bureo da gemer ho kont.

O klevet ze Fanch a bellaas hep laret gir; e-leiz a zongo en em dorne en e benn hep n'halle lakat tam urz ebet enne; a dam da dam eur zonzj a zav dreist d'ar re-all hag en em verk en lizerenno tan en e spered :

« N'am eus ken a labour!... Ken a labour... »

Ken a vara! Ma gwreg ha ma bugale a varvo gant an naon dre ma faot... Malloz ma mam-gaer a zo warnon!

Santout a re e benn evel o virvi; gwelet a re an holl dre o trei en dro d'ean ha n'an evoa gret 'met ter pe beder gammad pa raes eun dro wainean e-unan hag e koeas a-stok korf war ar porz evel eun den maro.

(Da heuilh).

LAOUIK.

KELIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

TREZENY. — Trugare

Evit klozan pardon Trezeny

Ton : Jezuz pegen bras eo

Safud, bro goant Treger,

Bro ar pardonioù kaer,

Bet a-viskoaz bru let

Ha da viken meulet.

Eus an holl bardonio

A ve gwelet er vro

Na so gwelet hini

'Vel pardon Trezeny.

Me die trugarekât

An dud a galon vat,

'Deus roet o skoazel

D'eur pardon ken santel.

Trugare, da gentan,

D'ar Rener a laran,

Rener ar vugale,

Sonerien Lezardre.

D'ac'h ive trugare,

Yaouankiz Lezardre,

Evit ar levezenez

'Peus laket en hon zouez.

Trugare, mamm dener,

Evit ho pugel ker,

Ho peus ken mat savet

Ha ken fur kelennet.

Furnez, doujanz santel,

En kalon pep pugel,

Ho poa war an douar

Ho karunen er gloar!

Trugare tad karet,
A zo kement doujet,
Gret ma rey ho pugel
Eter da Vreiz-Izel.

Gret ive ma kerzo
War rouden e dado
Gret ma 'nevo'n e greiz
Karante evit Breiz.

Neuze vo lavaret :
Breiziz zo dihunet,
En eur huchal bouez pen :
Bevet Breiz da viken!

Ha d'ac'h pastor karet,
Hir vue ha yec'hed
Setu ar mennozio
A gasan d'ac'h d'am vro.

L. CHARBON.

BENAC'H. — Eur c'hanv. — Ar zun-all e oa bet interet e Benac'h, eun engoez a garent hag a vignoued oc'h heuilh an interamant, an itron Du a Lok-Maria, mamm da Aotrou person Plouillo.

Da heman ha d'e dud, e kasomp, eus a greiz hon c'halon, hon gwellan gouc'hemennou a geogant hag e c'houlennomp digant hon leunerien pedi gant ene an hini zo maro.

PEURIT. — Gouel Breuriez ar Brezoneg. — Re abred oa karget hon c'hazeten, vit gallout koutan pen-da-benn ar zun-man doare ar gouel kaer a zo bet en Peurit. Lakomp hepken hon doa gwerzet eno 800 bilhed c'hoari-zac'h, ha trugare d'an Itron Provoet a Lanay.

A hendall, e lakomp ar zun-man hanoñ ar re o deus bet prizioù. Ar peurest, hag unan eus al labourioù kurunet, a vo laket ar zun a deu.

Pôtrud. — Prizioù 'vit leun ha 'vit skrivar ar brezoneg : Kentan, Pierre Gélard; eil, A. Gentil. Kentan accessit, Y.-M. Heudès; eil, Alexandre Bail; trede, Louis hag A. Kerlévéo ha Lucien L'Anthoën.

Merc'hed. — Kentan rummad, 11, 12, 13 vla. — Prizioù 'vit skrivaniha leun : Kentan, Léonie Henry; eil, Cecile Romp; trede, Thérèse Trébédan. Kentan accessit, Emilie Lucia; eil, Rosalie Manchec; trede, Marie-Joseph Coadou. — Eil rummad, 9, 10 vla. — Kentan, Victorie Cathou; eil, Anna Perrot. Kentan accessit, Alexandrine Lucia; eil, Yvonne Goarin; trede, Maria Pirion. Pemp accessit da François Quentric, Anne-Marie Ollivier, Marie Le Corre, Maria Trénel, Maria Gélard.

TOLET PLE MAT!

ASURANSOU AN ILIZOU

Kalz a veleien n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'h had hag en tu-hout da ze e ra paean eiz gwenneg dre vil nebetoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Skriwan da E. AR MOAL (Dir na Dor), a labour en tu breton an eskopti evit ar *Savoyarde*.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement asurans a zo.

GOULENNIT

E Ti-Moulerez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, hali Charner, SAINT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotrou abad BILBA, goloenn kartozh ha skeudennou (gant ar frejouz-kas).....	4 real.
Prezegon war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneq.
Hent ar Grouz.....	3 gwenneq.
Buc sant Anton a Bado.....	5 —
Pedennoigou ha kelennadurez d'ar vugale.....	2 —
Merzerenti an Tud Perboar.....	1 —
Buc an Tad Perboar.....	1 —
Al lez.....	1 —
Meulodi al labourer.....	1 —
Gwez sant Miltio.....	1 —
Gwez sant Roneri (skouennet).....	1 —
An diaoul-pioir.....	1 —
Kan an Istaned, kentoc'h mervel. Peden ar vartoloded. Gwez sant Kemo, hag all.....	1 —

Eun diskenn war ar priz evit am eur hini.

Red'eo etâ anzav ha klask ar Wirionez a-ziaevz d'imp. Mes penos gouzout ever arru gant ar Wirione? Kousians an den, harpet ha sklerijennet da gentan, gant ar fe; d'an eil, gant ar studi hag anaoudegez an amzer dremenet; d'an drede, gant an doujanz evit kelennadurez an Iiz ha kelennadurez ar re goz, a deu da dizout ar Wirione; pa ve tizet, eur joa ha n'he deus ket he far, a ro d'an den da anaout e ve kouezet mat.

Eun dra dies eo eta anaout ar Wirione? Eun dra eo hag a c'houlenn bolante vat, da gentan, ha neuze amzer, studi ha preder. Eur walen a zo hirie war hon bro, ma kred an holl e c'hallont tizout ar Wirione hep na studi, na doujanz evit Doue nag evit ar re goz nag evit ar re o deus karg da gelen. Eur walen eo pa gred an dud eman ar Wirione a-du gant ar c'hrenva, a-du gant ar gosteñ he deus bet, en eur votadeg, ar muian a voueziou.

Enep d'ar gwall-gredennou-ze eo red lavaret ha hadlavaret penôs n'e ket an dud, n'eus forz pegan galloudus ha pegan niverus e vefent, a ra ar Wirione, mes penôs eo red d'imp he c'hask, gant gras Doue hag hon fean, betek he c'havout elec'h m'eman.

Eno, neuze, vo gret an emgleo, war dachen ar Wirione, an emgleo start ha padus, an emgleo hep interest, nemet interest ar gwir.

N'eus intent ebet a gement a vefe mat ha padus nemet hennez. Lakomp en em glevie ar gatoliked *'vil diskar ar franmasoned*. Mes goude ma vo bet diskaret ar franmasoned, an emgleo a vo achu, hag ar peuc'h ive, hag an enebour a deuo hag a hac'kero adarre e grenv. N'eus diaze ebet, 'vit an dud vat, d'ober an emgleo hag ar peuc'h, nemet ar Wirione laket da vestr war hon bolante.

LIZEROU EUR BARIZIANEZ

deut da vale en Breiz

d'he c'hamaradez en Paris

(KENDALC'H)

Kerrosiou, 31 a viz Gwengolo 1908.

Lusi gez.

'Vit ar wech diwean e skrivan d'it, d'az pedi da zont d'hon eured an 22 a viz here. A'han da neuze, n'e ket labour a vanko d'imp. Fanchig an eus kavet da brenan eur vereri vras tost da Gerrosiou, hag eno ec'h efomp da chom (mar gallomp ober ar prenan) ha da derc'hel tiegez.

Ar wech-mañ, Lusi, ec'h an da hadober gwirion. Santout a ran dija n'on ken an hini e oan breman zo penzek de; de ha de, e santan evel eur seo neve o redek gant ma gwad 'n em gwazion hag a ra d'in gwelet an treo dishenvel diouz a ren gwechall. Paris a zeblant d'in bean pell pell, kuzet en eur goumoulen denval; ne glaskan ken komz eus Paris; ar c'hontrol eo, 'vel'rukun am be pa deu an hano-ze da vean lavaret dirakon. Souezus eo ar pezh a dremen ennon; eun dra bernak a zo o tec'hel ermeaz ac'hanon hag eun dra bennak-all o tont en e lec'h; me a zant eun nerz hag eur sklerijen neve ouz en em ober 'n em c'hreiz, 'vel eur vue neve krouet ennon.

Ha kement-se, Lusi, oun dleour anean da Fanchig. Pa zellau ouz Fanchig, pa gomzan gantan, e kred d'in e red buhanoc'h ar seo breton 'n em gwazion hag e trid an ine breton 'n em diabarz.

N'oun ket hag-en ec'h intenti ma c'homzou; ar gomz a zo nebeut a dra da zisklerian' treo ken c'houek ha ken don. N'eus forz, red eo d'in rei peurz d'it 'n em evurusted, 'vit ma teuo d'it ive c'hoant d'he zauva. Marteze zo aman ive eur Fanchig bennak o c'hortoz ac'hanout... Me garje!...

Kenavo, ma Lusi; etouez an holl vadou a c'hoant-taan evidout, me laka da gentan an eurvad a zo digouezet ganin. Pa vin et d'am ziegez, te deuo da chom eur pennad d'am zi, da zibri bara gwiniz ha krampouez tom.

Kenavo! kenavo! Dalc'h sonj eus an 22 a viz here!

Da gamaradez karantezus,

TEREZA.

Bretonez da virriken.

MARTELODED AR "LATOUCH-TREVILL"

Re abes, siouaz!
E renker s'ou glaz.
En hon Breiz-Izel!
Ma vije c'hoaz brazel!
Ma vije 'vit difen
Ar vro eo e koejent,
Ar vartoloded-se,
E vije digare

Da laret : Breiz-Izel, enor d'az pugale
A varv evit ar Franz!... Labour 've da vale
Evit gallout kavet martoloded dispar,
Evel ar re diwan dre-oll war da zouar.
Goude ar *Farfadet*, ar *Latin*, ar *Yona*,
E bourz ar *Gurunen*, en eur ober tri bla,
Eiz warn-ugent maro! Bretoned peurvuian,
Ha daou-ugent den-all gwad-dapet! Ha breman.

War ar *Latouch-Trevill*,
Gwad adarre, gwad puilh,
An eus, siouaz, redet
En deio tremenet!
Penzek den, en eun tol,
Friket gant eur c'hanol,
Eur c'hanol bruzeñt
Gant eur poult milliget,
Ha niver a re-all,
N'hallent ket 'n em diwall,
Tizet ha machaniet!
Nag a dud ankeniet!
Nag a vam adare
A vo trist o doare!
Nag a dad, a vugel,
Dreist-oll en Breiz-Izel,
A ouel en deio-man
Ar re 'garent muian!

Tintet, kleier Breiz; tintet, sonet glaz,
Rak daouzek Breizad, war bezek, siouaz!
'Deus kat ar maro war ar lestr brezel!
N'eus bro 'bet gwasket evel Breiz-Izel!

Youl Doue a zo dont! Met eun dra koulskoude
A ra da galz laret: Ma! adalek an de
Nan houller ken war vor beleien 'vel gwech-all,
Gant ar vartoloded... an treo a gerz gwall-fall!
Y.-M. G.

ADARRE...

N'eo ket c'hoaz ya'h an 19 martolod bet ma-c'hagnet, douaret mad an 9 lazet gant kanol al lestr *Couronne*, an 12 a viz eost diwean... an daerou n'int ket se'chet, nag ar glac'har distanet, ma teu d'imp, hag eus a Doulon bepred, eur c'helo skrijus.

Warlec'h al lestr *Couronne* setu breman eur c'hanol eus al *Latouche-Tréville* o tarza d'e dro hag o laza 15 eus hon gwellan bugale.

Truezus hag heuzus eo!

Truezus eo gwelet, en eun amzer a beuc'h, hon martolod o vervel, petra 'laran? o vezan lazet ken stank, o skuilh o gwad hag o kavout eur maro spontus en-kreiz o nerz, en-kreiz o yec'hed, en-kreiz o yaouankiz! Pelloc'h n'haller ken tostaat ouz eur c'hanol hep kavout eur bagad tud varo, finval eur bouled hep gwelet aezan o tarza.

Hepdale, ma talc'h an treo da gerzet evelse n'hon devo ken nag eul lestr, na zoken eur martolod...

Paour kez martoloded! En despet d'o nerz-kalon, na gredont mui sevel war eul lestr, hep kavout doan rak mervel, lazet mik, friket pe vac'hagnet!

Heuzus eo sonjal penôs aboue eun tri bla zo, en eur gonla *teir gwech* al lestr *Couronne* e-unan, ar *Farfadet*, al *Latin*, ar *Téna*, an *Epée*, an *Descartes* hag al *Latouche-Tréville*, a zo lazet en Franz 294 martolod! Tri-c'hant nemed c'houec'h en tri bla!!

Hag evel kustum, hon bro Breiz eo a zo adarre gwasket... Gwad 13 *breizad* an eus ruilhet adarre en-kreiz eun amzer a beuc'h ha hep digare abed...

Pegouls, o ma Doue, e kemerfet true ouz hon Bro? Pegouls e paouezo ar mammou hag ar gwra-ge en Breiz da ouela war o bugale hag o frijeou lazet!...

En keit ma ruilh ken stank an daerou en tiegezou hon Bro, eu keit ma klever ar c'hilaz o teurel he c'hlemmou truezus eus lein hon touriou...

en eur gemer lod en poanion an dud gwalllet, marteze ne rafemp ket fall o klask a belec'h e teu d'imp ken alies a walen; rak, kement-man a zo eur walen!

Da gentan, evel ma laran, n'eus ket gwall-bell, em fennad-skeid *Eur zell-tro*, micherourien ar porziou-mor n'o deus ken a zoujanz. An danve impliet gante a c'hall bezan danve fall hag an doare d'he implia a zo falloc'h c'hoaz. Boutet gant Pelletan enep d'o mestrou, roet troad d'e eneb d'an urz vad, micherourien ar porziou, dreist-holl porz Toulon, a zo holl dispac'herien (révolutionnaires).

Herve lavar eur martolod en deio-all, Toulon a zo eur porz-môr milliget!

Labour ar vicherourien a zo groet fall ha n'eo ket hep digare e welomp bemde kanolion o tarza ha listri o vont da goll.

Mar troomp kon zellou war labour heuzus hon Gouarnamant, war ar gasoni o deus laket an dud fall da digristeni hon Bro, ne vefomp ket muioch souezet ma koue warnomp bemde gwalen war gwalen...

Gwechall, n'eus ket c'hoaz pell, bemnoz goude fin al labour e vije laret eur bedennig war hon listri-brezel. Netra gaeroc'h eget gwelet pemp pe c'houec'h kant a dud, kollet etre an oabl hag an dour, o tont bemnoz da drugarekaat Doue!

Gwechall, pep bla, da Wener-ar-Groaz, hon listri a gemere ar c'haon evit azeuli maro hon Zal-veñ. Adalek ar beure ar c'hanol a glemme ha betek an noz, ar vartoloded dilabour, a gemere peurz en glac'har ar bed kristen.

Aboue Pelletan oferen abed ken!

Aboue Pelletan Gwener-ar-Groaz abed ken!

D'oust d'e spered, d'e ijin, d'e labour vad, d'e anaoudegez, hep zikour Doue, an den kez n'eo netra...

Hon Bro he deus dilazet Doue, Doue a zilez anei!

AR YEODET.

Breueriez ar Brezoneg en Calanhel

Disul, sul ar Rozera, goude ar gousperou, e vo gret en Calanhel al lennadeg vrezoneg, ar gouel hag a c'hoari ar vo da heul.

Holl vignoned ar Brezoneg a diredo a hep tu da welet ar gouel-man, kentan hini a zo gret en Kerne gant Breueriez ar Brezoneg. Bean vo eur brezegeñ gant *Ar Yeodet*.

E GWERZ

PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (DIR-NA-DOR)

PRIZ :

5 real; ha 4 *gweneg* ar fréjou-kas, da laret eo nao *gweneg* warnugent

al levr a daou c'hant pazen.

E penn al levr-man e vo kavet, hag hen sinet gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skrivvan reiz ha sklér ar brezoneg.

Skrivan d'an Otro Moal, 27, bali Charner, Sant-Briek.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, Kelemer Collège Notre-Dame, Guingamp.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaums.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

REWERJOEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

**EMBRANNOU-KONVERZ HA
KOUMANANCHOU**

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURZ An Grit.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.
FURZ An Grit.

Dalc'hit bepred d'ho prezzonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma vo trec'het,
Ouspen ar Vez, e ve Pec'hed d'
MILIN.

BREURIEZ AR BREZONEG

GOUEL PRAT

Ar zul, 25 eus ar miz, e vo en Prat eil gouel
Breuriez ar Brezoneg.

Ar vugale a zo pedet, adalek breman, da digas
o c'haierou da welet.

Mar 'zo bugale-all en Prat hag o dije c'hoant
da zont en *Breuriez ar Brezoneg*, e hallfont lenn
gant ar re all ha kemer goude eur c'houmarant
d'ar Groaz.

GOUEL CALANHEL

Setu aman, ar zun-man, roll ar prizioù a oe roet
disul da vugale Calanhel, pevar warn-ugent ane :

POTRED

Kentan rummad

Priz kentan : Yves Le Du.

Eil priz : Jean Briant.

Kentan accessit : Yves Fromentin.

Eil — : Louis Guillou.

Trede — : Jean Pape.

Penare — : Joseph Helléguou.

Eil rummad

Priz : Guillaume Fromentin.

Accessit : Yves Le Gac.

MERC'HED

Kentan rummad

Kentan priz : Marie Tasset.

Eil priz : Henriette Lenormant ha Caroline Le
Jan.

Trede priz : Louise L'Amis.

Penare priz : Maria Barbier ha Françoise Guer-
vinou.

Pempved priz : Anne-Marie Men.

C'houe'hved priz : Marie Amus.

Seizved priz : Anne-Marie Chéquer.

Eizved priz : Ambroisine Daniel.

Naoved priz : Françoise Daniel ha Célestine
Calvez.

Kentan accessit : Ambroisine Calvez.

Eil — : Marie Denmat.

Eil rummad

Priz hentan : Marie Carons.

Eil priz : Maria Guervinou.

Ar c'hoari-sac'h

En tri c'hoari-sac'h a zo bet gret betek hen, en
Plounerin, en Peurit hag en Calanhel, setu aman
ar vugale o deus goneet lodennoù, daou eus Lo-
mikel, daou eus Carnoet, daou eus Plijidi.

Eus Lomikel :

Emile Bihan ha Françoise Brozec ;

Eus Carnoet :

Marie Tilly ha Joséphine Le Gall ;

Eus Plijidi :

Yves-Marie Thépaut ha Joseph Béchec.

Kaset e vo d'e al lodennoù o deus goneet.

GOUEL PEURIT

En Peurit 'oa bet gret kent an gouel *Breuriez
ar Brezoneg*, daou vla vo breman da viz c'houe-
vrer. En Peurit, en Pen-ar-C'hoat, e oe ganet
Breuriez ar Brezoneg. N'e ket souezus mar
tizoo di disul gant plijadur, evel an evn bihan o
lizrei d'e nez. Daoust d'an digemer kaer he deus
dre holl, *Breuriez ar Brezoneg* n'hall kaout nep
lec'h gwelloc'h digemer na gwelloc'h skoazel evit
en Peurit, rak nep lec'h n'hallfe kaout eun ti gwel-
loc'h 'vit Pen-ar-C'hoat, tud muioc'h madeleuz
evit an Otro, an Itron Provost a Launay hag o
ziegez. Bennoz Doue warne ha war o feadra, pa
c'houzout ober gantan eun impli ken mat en ken-
ver hugale vihan Breiz-Izel.

Ar vugale ive, en Peurit, a zblant, al loden
vras ane, d'erc'hel d'o *Breuriez* ha pleal ganti eus
o gwellan.

Pôted vihan an O. Bescond, ha, dreist-holl,
merc'hed bihan an dimezel Simon, mestrez-skol
gristen, o deus labourer brao ar bla tremenet ;
diwar o c'haierou hag o labourioù oa ez gwelet
an eus desket meur a hini ane penôs brezonek ha
galleg a zo daou yez dishenvel, ha penôs ne veint
na lennet na skrivet o-daou memes tra. Setu eoa
ar poz kentan da zeski. Goude ze, o lakat an
dorn en labour hag o skrivan brezonek pep sun
war e gajer, e teu tam ha tam ar bugel da gemer
e bleg da skrivan pep gir 'vel zo dleet.

Den ebet na oufe lavaret nag a zervij a hall ar
brezonek renti evit kelen ar vugale. An tadou, ar
mammou koulz hag ar mestrou-skol hag a gred
d'e nozout ouz o bugale ha harz ane da ziski, en
eur drei ane war ar brezonek, n'ouzont ket, en
gwirione, petra reont. Barz ar brezonek eman
griten an deskamant evit ar Breton.

Ar brezonek a zo bet roet d'ar Breton evit digeri
ha labourat e spered, memes toue tra 'vel eo bet
roet d'ean ar skouarn evit klevet, an teod evit
komz, al lagad 'vit gwelet. Vit ober 'vel zo dleet,
e reukfed deski da gentan ha hep Breton bihan
lenn ha skrivan ar brezonek. Neuze vije gwelet e
spered o kerzet kalz primoc'h war rôk, dre ma
kerze d'eo eun hent anaevet, ha man dre eun hent
disaive, evel hini ar galleg. Neuze vije tennet diouz
spered ar bugel kalz muioc'h a freuz 'vit ne den-
ner breman, rak breman ne rer nemet mouzan ar
vugale ha togra d'e o spered o vont d'e bepred dre
ar galleg, ha man nemet dre ar galleg. Sur oun,
ma vije roet ar memes labour d'eur bugel d'ober,
da gentan, en galleg, ha goude en brezonek, an
hini brezonek a vije pell dreist d'an hini galleg.
Awan warlerc'h, c'houi gavo, en eur lenn eur
Barti babia, an testeni eo gwir ar pez a laran.

Dalc'homp eta da vat gant ar Brezonek en Peu-
rit ; ar bla-man, ar vugale a hallo kregi da drei
pennadon brezonek en galleg, ha pennadon galleg
en brezonek, o t'erc'hel, ouspen, da skrivan war
o c'haierou bep sun, eun dra bennak diwar *Groaz
ar Vretoned*.

Ma ne dolan ple, e vanin hep koutan doareoù ar
gouel disul, ha pec'hed e vefe !

An Itron Provost a Launay, o kemer ar gouel
d'ober en he zi, oc'h ober sevel eun teatr, o forniz
an tombola, he devoa kemeret eviti ar garg poun-
neran, ha n'he devoa lezet gant pôted *Breuriez
ar Brezoneg* nemet ar gounidou hag ar blijadur.
He zud endro d'ei, o heuilh he skour hag bec'h
urz, a zikouras ive eus ar gwellan, kement ha ken
bihan ma oe gret al labour ha gret mat, hep poan
na dispigu ebet evidomp.

Daru a labourer war an teatr, darn-all a werze
sonioù ha bilhejou, darn-all a bede sant Anton

da bellat ar glao hag ar gwall-amzer. . . Pep tra a
deus da vat, rak mar oa skeudik am amzer, da
vihanan, ne deus taken c'hlaou ebet ; ar gouel a
oe gret ermeuz.

Tud a oa betek eus Pleuzal hag ar Roc'h. Pa
lavarfomp hon doa gwerzet eiz kant bilhed, vo
ezet goût e oa kalz o prenan, kalz a dud ive o
welet hag o chileo prezegennoù ha kân.

An Otro Pennec, kure ar Roc'h, a gomzas da
gant. E berri gomzou, e lavaras pegen mat eo
d'erc'hel start d'ar Brezonek, gant ane ne dispilpe
diganimp ar Fe asambles gant ar yez, p'eo gwir, evel
ma ve lavaret.

Ar Brezonek hag ar Feiz
A zo breur ha c'hoar en Breiz.

Warlerc'h an Otro Pennec, e teuas *Ar Yeodet* ;
evel just, ne oa ket e gomzou d'ober gantan, na
da glask ar pez an evoa da laret. Pôted vihan an
O. Bescond a roas neuze eun tol zon hag a ganas
sonioù, evel *Chom en Breiz-Izel*, deut brao tre
gante ha gant *Ar Yeodet*. Etre ar sonioù hag ar
prizioù, dans an ourz a lakas fent ha plijadur.

Laket oa bet aman ar prizioù ar zun-all. Eiz eus
ar vugale a oa dilerc'hel eun tam : n'o devoa skri-
vet labour ebet ; adalek breman e fello d'e bean
evaziek da lenn ha da skrivan hep sun eur gir
bennak a vrezonek war o c'haierou.

An tombola a glozas an treo. Eun eur e padas,
kement 'vel a lodennoù a oa da dennan warne.
Bean eo tud evurus, rak hiniennou, n'e ket eul
loden hepken a dapjont, mes diou ha ter, ha treo
a dalvoudegez.

Benn kentan bla, mar be bolante Doue, vo sta-
get eur pez brezonek pe daou ouz ar gouel, hag e
vo kalz kaeroc'h. Fellout a ra d'ar vugale bean
war evez, ma vo komzet c'hoaz ane hag eus Peu-
rit, p'eo gwir o deus an eurvad da gaout tul da
zoursial dioute gant kement a galon ha kement a
vadelez.

Arôk kwitat Pen-ar-C'hoat, disul d'abarde,
taboulinou ha kléronioù a c'hoarias d'an Itron a
Launay ha d'he zud eun tol zon d'o zrugarekat.
Ni ive, arôk achui ar pennad-man, a renk lavaret
d'ei trugare a greiz kalon, rak he madelez a vo
kiriek hon devo, 'vit eur pennadig, peadra da zer-
c'hel gant labour *Breuriez ar Brezoneg*.

Ra vezo eta hon faeron sant Erwoan ken tru-
garezus en he c'hanver ha ma 'z eo hi en hon c'han-
ver-ni !

DIR-NA-DOR.

EUR BARTI BABIA

Ya, eur barti blijadur a c'hallan da laret eus ar
barti babia. Dec'h diwean e oan bet o valia, ha
biskoaz ne oan bet ken kontant ; nan, biskoaz na
'm oa gwelet kement-all.

Ne oa 'met babi dre holl endro d'in ! Bean oa
reo du, reo ru, ha babiolez kement ha polez.

Nec'het 'oan o c'houe dre belec'h kregi.

— Allo ! Mari, Mari-Janik, hast fonnus redek
'ta, deus da zikour ac'hanon da bigual war ar
waan vras !

— Hounnez ? eme Mari-Janik ! N'eus ket trawalc'h
warni ! Sell du-hont unan vihan hag e zo 'barz ;
o ya, he bec'h.

— Ha me da hijan gwasan ma c'hellen, 'vel Sam ;
son gwechal.

— Allo ! Mari Jobik, keit ma vi o klakenni, me
'm o dastumet kalz ; sell 'ta, leiz ma barlen !

— C'hanta, me 'm eus leiz ar zac'h-kerc'h !
Hounnez zo charre ganti gant he barlennig.

Kentan ma omp o tastum hag o fibri, e teuas
ar mouilc'hi beg ru d'ober gwap ac'hanomp ;

ABOSTOLED AR VRO

Kinniget d'ar varzed kristen.

Kement eo frealzus da galon ar Breizad tanvaat an eürusted eus ar garante-vro, ma ne gaver war ar bed netra dudiusoc'h. An holl varzed, an holl skrivagnerien, ha kement hini a lufr war e dal sklerder ar fe gristen, hen lavar bemde dre vouez an telennou, dre nerz ar prezegennou, ha, dreist-holl, dre ar skouer vat a rouet d'o c'henvroiz, o viret gizion koz, fur ha santel hon c'hendadou.

A zun da zun, e lennan war *Kroaz ar Vretoned*, (a zo lne hon Breiz-Izel), hanoio neve, a-zindan pennadou, skrivet darn anez eo en eun hunvre dispar a eürusted, 'n eur c'hornig bennak war ar mez, pell pell diuz an drouz, darn-all skrivet en eur barr buanegez, o welet brezelekat ken didrue an holl draou fur, onest ha kristen; mes an holl skridou ha barzonegez a gaver enne eur garante virvidik evit Doue hag ar Vro.

Ne glever eus kalon pep Breizad nemet soniou, nemet ar c'homzou-man : Breiz a hadsavot!... Breiz n'hell ket mervel!... Komzou a esperanz, mar zo. Mes stouaz, red eo paouez da hunvreal; n'e ket awal'h kanan, skrivan ha laret : *Me gar ma bro!* red eo stourm kalonek, poanial didrue ha dispont enep an enebour; rak, digoret, en han' Doue, ho taoulagad war hon Breiz, war he religion, war he gizion, war he fobl, ha laret d'in, en gwirione, en pesort päl eman breman ar bobl vretou.

Eur c'hoziad bennak a vir digailhar ar fe, ar gwiskamant, ar yez, digaset d'ezan a dreuz ar c'hantvejou. Ilizou, kalvariou a gaver c'hoaz en Breiz, mes n'int ket darempredet gant respet ha devosion; mont a ber war glouarat en kenver Doue, daoust d'hon beleien da labourat gant mui a nerz evit biskoaz. Kement-se a zo ar freuz eus labour an dud a hadas er vro-man kement a dizurjou, dizurjou kuzet gante ken brao a-zindan komzou flour.

Breiz a zo evel eun den prest da vervel gwasket gant ar roufen. Eur yeo pounner a zo war he choug prest d'e vougan en kreiz ma oa leun a nerz hag a c'hened.

War zao eta, o barzed! Ne lezet ket hon mammvro da vervel; mar zo gwad en ho kwazion, diskouet ho nerz-kalon, ne chomet ket da hirvoudi pelloc'h! Varc'hoaz 'vo re divezat.

klask a ret ar gouli evit hen yac'hat; bean zo meur a hini. Ech'an da laret d'ac'h ive unan eus ar re vrasan.

Piou na oar pesort marvailhou a dol breman endro d'eze an dud yaouank, dreist-holl? Piou na anav o zoniou, o c'hanaouennou heugus? N'eus nemet ze dre oll; dre oll e ve kanet breman, ouz tol, war fin ar prejou, o labourat, o tiskwizan, d'ar festou, d'ar pardonion, ec'h er 'n eur ganan pep tra, pep tra nemet ar pez zo fur hag onest.

Kanan rer er beilhadegou, kanan rer dre-oll nemet en iliz ar barouz, d'ar zul. Neuze ne glever ket an danserien, na pötred ar festou-noz o kanan na *Gloria na Credo*, na zoken o respont d'ar c'hantikou brezonek.

Ar c'hanaouennou fall gallek ha brezonek o deus hadet ar veinadurez en kalon an dud yaouank. Henez a zo eur gouli bras vo red yac'hat, pe anez ze ne dalve ket ar boan ober netra a-hendall.

Souezet e vo ar varzed gant ma c'homzou. Poanial a reont da raman, d'ober soniou, kanaouennou leal ha mat evit pep rumm. Souezet e vo *Kroaz ar Vretoned* a gas bep sadorn eun nebeut soniou dre bevar c'horn Breiz-Izel; mes difaziet holl, rak ar c'hanaouennou n'int ket anaveet nemet gant ar re a skriv ha gant lennerien *Kroaz ar Vretoned* pere a zo tud fur n'o deus ket ezom eus ar sort soniou.

Petra eta a zo d'ober?

— Sevel eur Vreuziezh abostoled neve. Klevet Dir-na-Dor e-unan o tizrei diwar an oferen hag o klevet kanaouennou gallek da vouaran an holl, mes brezonek, hini!

Ra vo savet eta eur Vrenniezh da hadan dre oll gwerziou ha soniou ar varzed kristen. Perak, pa o deus ar re fall o abostoled, n'hon defe ket ni hon re?... Ma vefe evelse eun nebeudig pötred a galon, distag eus ar madou, distag eus ar bed, gwir kristenien, tud a skouer vat, o kemer ar

vicher da labourat a hed o bue evit Doue hag o bro, me lavar d'eze : « Kemeret penn an hent, eun delen eus ho koste, gras Doue en ho kalon, labourat, rak ganaoc'h eman bue Breiz-Izel! »

An abostoled-ze a yafe daou ha daou asambles da hadan kanaouennou ha gwerziou mat en tiegeziou, er foarion, er pardonion, en eurejou, ha dre oll elec'h ma kavfent eur vodadeg bennak. Mont a rafent da glask an dud yaouank d'an ebatou zoken; neuze, perak elec'h leuskel da gas an dans genaouerien lubrik ha dife, ne ganfent ket soniou divlam, mes mat da 'n em didui? Perak, da c'houde kanan eun dro-dans ken brao, ne werzfent ket tro zo ar ganaouen o defe kanet? Gwelet e vefe da c'houde an holl dud yaouank o klask an tu d'o c'hanan. Perak n'efent ket ive d'ar zul d'abarde, epad an hanv, d'ar redadegou kezek a ve breman dre oll? Eno c'hoaz e c'hallfent kanan ha gwerzan kanaouennou. D'ar gouanv, p'eo hirr an noz, netra gwelloc'h evit dastum tud ar memes keraden, da ganan d'ezo soniou ha gwerziou. Evit an dud yaouank e vefe red mat leznan soniou eus o ead, soniou a garante, rak ne dalve ket ar boan kinnig d'ezo kantikou spirituel d'an tol kentant; ar pez zo d'ober eo sevel kanaouennou yaouankiz, mes fur ha divlam.

Da zavel ar Vreuziezh breman, e fell tud a benn, a c'houlenfe, evel ar breuziezhou-all, o zam aluzen digant an oll dud vat a garfe labourat evit Doue hag ar Vro.

Piou na rofe ket en touez lennerien ar *Groaz* e dam aluzen da lakat moullan soniou ha gwerziou evit ar bobl?

Diwar an aluzen-ze ive, e vefe savet eun tam paeamant d'ar valeourien, d'eze da hellout bevan, kwit a vizer nag a dienez. Ar valeourien, gwerzierien ha kanerien, e vefe red d'eze ober ar le e chomfent en peb bro kristenien vat, aketus d'ar zakramanchou, tud a skouer vat en pep doare. N'e ket eta eur c'hoari a vefe kement-mau. Mes piou ac'hanoe'h, barzed, a zo distag a-walc'h e galon diouz a bep tra evit 'n em izelaat en renk eur baleer-bro, en renk eur gwerzer soniou? Koulskoude n'eus nemedoc'h o deus fumez ha diskamant a-walc'h evit eur garg ken kaer.

Rak sonjet erfad penos eo red trec'hi war gwaperz ar bed, war doujanz ar bed; lies ho pefe da respont da bep sort goulenno. Red e vefe d'ar valeurien kaout eur galon izel da vont betek ar bobl. Ez eo raman didrons, en disheol, pe 'n eur gamprig ha laret : « Me labour 'vit Breiz-Izel » ; mes mui a zo d'ober. Paouezomp da hunvreal. Deomp war rök!

Boul'het am eus penn ma c'huden; n'am eus greit nemet boul'han. Mar kar unan beunag kregi er labour, ra chilaouo mouez Breiz-Izel damantus o hirvoudi.

Doue na fell ket d'ezan koll ar Vretoned; mes red e vo d'e 'n em zikour evit bean sikouret.

Ar galon a zo em c'hreiz.

'Zo da Zoue ha d'am Breiz;

Dinerz on, mes gant gwir volonte,

E labourin 'vit ma bro hag he fe.

Pen-Breton.

KOMZ-LENN-SKRIVAN

Eun dra souezus eo pa 'n en gaver gant Bretoned, gant bugale ha, zoken, gant tud vras ha n'ouzont ket lenn o yez, hag i gouzont koulskoude komz anean. Laket d'e eur gazetenn evel *Kroaz ar Vretoned* pe eul lev'r brezonek, dirak o daoulagad, hag e welfet n'int ken 'vit anaveout gant o daoulagad, diouz o gwelet, ar girion a anaveent gant o skouarn, diouz o c'hlevet.

War muzellou o c'henvroiz ec'h anaveont mat ar brezoneg, mes war baper n'heu anaveont ken. Memes tra int 'vel eun dall hag a anave e vamm diouz he mouez, mes n'hec'h anave ket diouz he gwelet. Ar Brezoneg komzet a zo evite eur mignon koz; mes ar memes Brezoneg, mar eo skrivet, a deu da vean evite eun estranjour; chom a reont notet da zellet outan, prest da lavaret : Petra eo heman?

Eur bugel dall n'hall ket anaveout e vamm, nemet diouz he mouez, mes eur Breton, nemet ha

dall a vefe ive, a hall anaveout e yez war baper. Trist eo eta gwelet ken lies a Vreton, hag-en n'int dall ebet koulskoude, ha n'ouzont ket anaout o yez pa ve skrivet.

An dra-ze 'zo trist en daou stumm : abalamour d'ar Breton e-unan, paourik kez a-walc'h 'vit gouzout e yez nemet dre hanter; abalamour ive d'ar Brezoneg, a zo en argoll dal ma eo tam ebet dizanve evit ar Vretoned.

Anaoudegez eur yez a zo henvel ouz eur skeul ter bazon; ar bazon disteran eo anaoudegez ar yez dre al lagad, da laret eo, gout hen lenn; hag an hini uhelan, an hini gentan, eo anaoudegez ar yez dre ar spered, da laret eo góut laket furm reiz ar yez war baper, gir ha gir, pe hen skrivan.

Pa ouier skrivan, neuze anaoudegez ar yez a zo dent, a-ziazev, en diabarz spered an den; hep bean komzet na skrivet, eman en e benn, ken, pa gar, e ra evel kroni anean dre e bluen, o verkan ar girion war ar baper. Ze 'zo memes tra evel eun den aman, — ma tizroin c'hoaz war ar pez a lavaren breman souden, — a anave e vam diouz he c'hlevet ha diouz he gwelet hag an eus, ouспен da ze, ar galloud d'ober he foltred war baper, anat mat, ken lies gwech 'vel ma tro 'n e benn. An den-ze, hep ma ve e vam war hed gwelet na klevet, a hall he gwelet ha kazi 'vel he c'hlevet. E vamm a zo 'vel beo evitan da virkiken.

Perak? Abalamour poltred, dremm e vam a zo 'vel garanet en e ziabarz ha ma eo mestr d'he gwelet hep zikour al lagad nag ar skouarn.

Pa ve skrivet ar yez, neuze eo krenv; neuze e kerz war rök, neuze e vev; mes pa ne ve nemet komzet, neuze eo gwan, neuze eo dister, neuze 'man o fallat bemde, o tismantr, o vont da netra.

Ar c'homz, anean e-unan, a dispen ar yez, evel ma tispen an toliou-mor rec'hel an od. Ar skrivan a unan, a dastum, a sklerijen ar yez, a galon d'ean poell ha galloud. An dra 'zo skler. Abenn skrivan, eo red 'n em glevet war ar stumm da rei d'ar girion, abalamour gallout 'n em lenn; mes evit komz, n'e ket red sellet ken barr-ze. Nag a Vretoned a 'n em intent dre gomz, ha ma skrivfent 'vel e komzont, pe 'vel e kred d'e e komzont, na 'n em intentfent ken kammed!

Ar gomz a zo losk; ar skritur a renk bean start ha reiz; dre ze, e lavaran, ar skrivan a zav ar yez; ar c'homz, hep ar skrivan, hen diskar; ar skrivan a vir ive ar yez, rak ar skritur a chom; ar c'homz a goll ar yez a dam da dam, rak ar c'homzou a ya gant an avel.

Barzar skrivan eman gwirien, nerz, galloud, bue ar yez; bean eo, pa ve skrivet, 'vel eur mezellour en e stern, hag e weler ennan e skeud frez; ar c'homz a zo eur mezellour ive, mes teulval ha chanj-dichanj, henvel ouz dour eur stank, pa dremen war he c'horre eur barrad avel. Et da glask ho skeud enni neuze!

Ar Brezoneg a zihuno, a vevo, a gresko, a drec'ho, ma teu da vean skrivet gant ar Vretoned, n'e ket, avat, skrivet gant pep hini herve e benn, (rak ar skritur na vije neuze netra en tu-all d'ar gomz), mes skrivet herve eur reolen gret evit an holl ha digemeret gant an holl. Ar reolen-ze eun em ra a de da de. A-walc'h eo e ve skrivet ar brezoneg, 'vit ma vefe klasket, gant ar re a skriv, skrivan memes tra, rei d'ar girion eur stumm dereat ha bepred henvel.

Poan a zo koulskoude, o kouean er memes tol. An holl a anzav 'zo red eur reolen; mes pesort reolen?

— Ma hini! eme unan.

— Ma hini me! me egile!

— Nag ho hini na ma hini!

Ar reolen-ze a zo merket dreist-holl, en istor ar yez; red eo he c'hask 'vit he c'haout; red eo eta studian 'vit danzen eun dra bennak a dalvoudegez. Eur wech kavet al lezen-ze, eur wech dizoloet dirak daoulagad ar Vretoned, neuze, ma kredont eo dre ar skrivan e vevo ar yez, o dever a vo doujan d'al lezen-ze, hag o dever striz; anez se, e rofent o-unan d'o Bro tol ar maro.

DIR-NA-DOR.

FANCH AR BEULBEZ hag e gentan gweacho

(War an ton a garfet)

Mat da vean hanet war ar leuren-c'hoari, en
eurejo hag er prejo.

Kentan gwech ma tougis brago,
Me en em gavas ken faro
Ma renkis monet hep dale
D'hen diskouel d'an holl vugale.

Kaout 'ris meulodi ha gloar,
Ha kalz muioc'h c'hoaz a gailhar :
Krammenet e oan pen-da-benn.
'Vel eur c'haz ruihet er vouilhen.

Er ger pa digoueis d'an noz,
E oa ma zad ouz ma gortoz :
Diski res d'in, e berr-amzer,
Dansal heb binou na zoner.

Meulodi ma c'hamarado
Ac'h es kwit gant ar bac'hado ;
Ne chomas eus an abaden
Nemet blousadur ha debren.

Kentan gwech 'c'h is d'an oferen,
E oe streviet en em c'hichen ;
Me da laret, a vouez uhel :
« Doue d'ho pinnigo, Katel ! »

An holl da sklokal a grogas,
An otro person a grozas.
Ha ma mamm fountet gant ar vez
Eus an iliz am c'hasas 'mez.

War ma zamm chouk festig ar vaz
Eur wech ouspenn a c'hoarias :
« Mec'hieg, disk eman ar c'hiz
Da devel epad an ofiz. »

Kentan gwech 'c'h is 'li eun hostiz,
Gand p'otred yaouank, 'c'h eviz,
Moc'hajo kement ha kement,
Ma vanis kousket war an hent.

Pa dihunis war eur bern mein.
E oa eur vantel ouz ma c'heiu,
Eur pez boned ewar ma fenn,
Ha d'o heul, eur vroz, eur gorfenn.

Pa glaskis goût piou 'nevoa groet,
Ar loar e oa, herve glevet :
Skwiz gant he dilhad liou arc'hant,
He doa chenchet akilhamant.

En hent-houarn kentan gweach
'N em gavis o vont en beach,
E oa gain ar valizen,
Ken ledan hag eur variket.

Eur skoed, 'me p'otr ar bilhejou,
A gousife kas ma atrejou :
« Piou lar d'ec'h dougen ma c'houf brein ? »
Ha me d'hen lakat war ma c'hein.

'Pad c'houec'h eur, o klemm gant an droug,
E tougis ar c'houf war ma choung,
Ar veajourien endro d'in
O c'hogea hag o c'hoarzin.

Kentan gwech ac'h is d'eun eured,
E oan dorn-ouz-dorn gant Janed ;
En em garout a ramp hep mez,
'Vel daou evn deut er memez nez.

A greiz holl, keit oamp o tansal.
Ma zok a stokas ouz he zal,
Ha chetu koef ma zurzuel,
O nijal kwit war an avel.

Heget gand merc'hed o c'hoapat,
Janed roas d'in eur fasad ;
An de warlerc'h 'c'h es eus ar vro,
Biskoaz about u'e deut en-dro.

Evit harz enni da zonzal,
En em lakis da chasaal :
Ma c'hi Medor, e-kreiz e benn,
Eo a dapas ma c'hentan teun !

Kentan gwech ac'h is d'ar marc'had,
Gant peder glujar ha diou c'had,
E felle d'in kat, 'r'ok distrei,
Eur c'hojellad mat a vouei.

Unan eus ar gedon, michaus,
Na oa 'met baoutet, dre drouk-chaus,
Ha hi en eun tol er ruiou,
O tilammet dreist ar staliou.

'Vel hellet kredi, ne chomis
En em geno da drei ma biz ;
Eur zell war belec'h moat hepken,
Ha setu me warlerc'h ma loen.

Tud ar marc'had, eleiz ar ru,
Oa lod a-eneb, lod a-du :
— « Pewar real e teny a benn ! »
— « Pewar real na deny b'ken ! »

Genaonien, me e a vo
'N hini vo trec'h, ha kenavo :
Ghetu ar c'had chouchet 'n eur c'hora,
N'em eus warni 'met lakat dorn. »

Sac'h an dien ! eur vaouez goz,
'Zo deut d'am lurian en he broz,
Ha me 'vel enn tarz-kuruno,
Kouet en he fanerad uot !

Mevezennet holl gant ar strons,
Eur palastr melen war ma fons,
Warbenn hellis sevel, ar c'had,
Oa skampet pell diouz ar marc'had.

Gwasoc'h 'so ! t distro war ma roud,
Foeltr biskoaz nan hellis kaout
Ar c'had-all, ma feder glujar :
Tagan e ren gant ar gounnar.

Setu ma gweacho kentan,
Bean int eus ar fentusan :
Fanchig ar Beulbez na rer ken
Ac'hanon dre ar vilajen.

Gab LISKILDY.

AR GER VILLIGET

GANT

LAOUIK

(KENDALC'H)

II

Tud yaouank ar mezio, laket en o spered gant
ar gazetenno fall a gaver breman en kement toull
bilajen a zo, ar c'hoant d'eur vue plijadureziou hag
avanturio na gavont ket en sioulder o farrouz, a
c'hoanta mont da Bariz.

Pariz a zo evite ar ger vinniget a lak an ever-
sted en kalon kement-hini a deu daveti dal m'an
neve stoket e droad d'ha ruio. En Pariz e ve gouel
bemde, (ha labourer d'ar zul, siouaz)... En Pariz
e ve goneet arc'hant a vozado, en Pariz an holl a
zo otrone.

Hag ar zonz-se ec'h a 'n o fenn dre m'o deus
gwelet tud o tont d'o bro gwisket evel otrone ar
c'hastel pe bourc'hizien ker ; tud ha na zellent
ket tost ouz eur pez ugent real. C'hoant a deu d'e
da gaout eul leviten ha da zouezi o c'henvroiz
evelse ive.

Allaz ! mar gouvechent nag a boan he deus kous-
tet al leviten-ze, nag a loustoni, a ampoezon an
diabarz, a zo renket meskan evit gallout dout da
zouezi an dud d'ar vro, ne c'hoantafent ket kement
stad ar re 'zo tec'het.

N'e ket gant zonzjo evelse e oa et Fanch da
Bariz ; anaout a re bue ar vicherourien eno, o vean
gret tri bloavez servich a goste d'ar ger vras ha
pleustret meur a genvroad e-pad an tri bla-ze.
Gouzout a re penaos, evit dastum eur gwenneg
bennak en heneziz, ec'h e ret poanial ha sellet
ken tost eno hag en Breiz, rak mar goneer
muioc'h a arc'hant, aezetoc'h e tispigner ive. Gwelet
en evoa meur a Vreizad eun hanter tristoc'h o
stad evit en o bro dre wall-chanz a-wechou, med
re alies dre o faot, ive. Anaveat en evoa, hag e oa
gwerzet gante o enor hag o ine evit kaout an
arc'hant-se, re boanias da c'honid, pe kouet en
dizurzo dre an dienez hag an dizesper.

Hen a oa onest ; hen na deus ket da Bariz da
glask ar biljadur, med da c'honid tri pe bevar
c'hant skoed, ha neuze ec'h aje da chom d'eun
tammik mereri a oa du-hont kuzet 'skeud an derv
koz en Kerdual. Bean 'nevoa evitan an nerz hag
ar yec'hed, eur pried leun a garante d'e skozelli
ha fianz an evoa bean dizro d'ar vro a-benn daou
pe dri bla.

Ar c'houec'h miz kentan an treo ac'h aes ervad.
Labourat a re e fornio 'n eun ijinerez gaz ha
gonid mad a re ; ne lake gwech troad en ti eur
marc'hadour gwin hag ar pejo aour a groge da 'n
em dastum en korn ar pres, rak bevan a rent gant
nebeut, e bried hag hen.

(Da heuith).

LAOUIK.

KELEIER EUS AR BEZ-OLL

Ar Bulgari hag an Turki. — Ar Bulgari a oa
betek breman eur vro vras gouarnet gant eur
prins hag a oa dindan an Turki.

Ar Bulgari harpet gant an Aotrich he deus laret
ne blegje ken d'an Turked. He frias an eus ke-
meret an hano a Czar, ha savet eun arme a gant
mil den armet mat.

Ar greden a zo koulskoude ne vo ket a vrezel ;
gouarnamanchou an Europ a glasko ober d'an
Turki ha d'ar Bugari 'n em glevet.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

GWENGAMP. — An avalou. — Disul an
avalou a yee 16 real. Darn, herve, a werzas 17.

Interamant. — Dirion e oe interet en Gwen-
gamp, liou Ar Roue lazet war al « Latouche-Tre-
ville ». En daou vla, an eil gwech eo da Wen-
gampiz da welet eun interamant evelten.

LANUON. — Maro. — Louis Grall, oajet a
70 vla, a zo kouest ha marvet en eur lakat e droad
war dreujou an iliz, disul, en oferen seiz eur.

PLEUMEUR-BODOU. — Tan-gwall. — An
tan an eus devet eun ti da Louis Bernable, la-
bourer. An ti a dalveze 800 lur. Ne oa ket asuret.

ROSTREN. — Votadeg. — An otro Cazin
d'Honinctun a zo bet hanvet kuzulier departa-
mant. An otro Cazin a zo eur Breton, mer Grol,
o chom er vro hag o komz brezoneg. Gant
86 mouez an eus trec'het war an otro Barbier,
p'otr ar gouarnamant, daoust da enebiez an otro
Kerguezec, depute Gwengamp.

YVIAS. — Etre daou garr. — Eur c'harr-dre-
dan o tont eus Pempoul a stokas ouz eur c'harr
stag warnan eun anevad-kezek. Ar c'harr-dre-dan
a stlejas egile eur pennad hag a goueas goude en
doufle. Torret e oe lies a dra ennan. Mes pelra re
d'ean mont re brim ? Gant an dud n'aruas droug
ebet.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

E GWERZ : Grammaire du
breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skriuan d'an Otro CLERC, kelenner Collège
Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

PIPI GONTO

Marvailhou neve

gant E. AR MOAL (Dir-Na-Dor)

PRIZ :

5 real ; ha 4 gwenneg ar frejou-kas, da laret eo
nao gwenneg warnugent

al levr a daou c'hant pazeu.

E penn al levr-man e vo kavet, hag hen sinet
gant kalz a skrivagnerien, an diviz neve evit skri-
van reiz ha sklér ar brezoneg.

Skriuan d'an Otro Moal, 27, bali Charner,
Sant-Briek.

hag ar c'higined 'ta! Ar re-ze 'oar krial warnomp. O! me garje beau 'n o flaso! Neuze, me raje ma nez war ar ween, hag e vijen 'pad an de diwar an eil gween war eben; neuze me ouveje pere eo ar gwellan hag an dousan.

Red e d'in laret ar wirione; fae oa ganin benn ar fin gwelet babi; doan am oa da gal kroz, rak noz tenval du e oa pa oan oc'h arruout er ger. Kement a blijadur 'm oa bet, ken ne ris 'met hunvreal 'pad ma c'housked; ne welen 'met babi dre holl endro d'in. Gwelet ren ar brankou o plegan hag o tiskan betek ma geno; en eur gir, di-hunet oon bet en eur c'hoarzin.

Laret 'm eus ken da vla d'ar babi, ha laret trugare d'an Otro Doue ha d'ar Werc'hez vinniget.

Thérèse TREBEDEN, 12 vla,
Skol kristen Pevrit ar Roc'h.

Bean oa c'hoaz labouriou koant; mes ar skritur na oa ket ken ezet da lenn ha skritur heman.

KENTAN PRIZ EN PLOUGASTELL-DAOULAS

Ar Groaz, an Alar hag an Delen

D'an Aotrou Dubourg, arc'heskop
karet ar Vretoned,
Kinnig doujus.

Al labour eo lezen, lezen ar c'hrouadur.
Ar beden a frealz krizder an Toukard (1);
Ra zeuio peb Breizad da glevet ar zoniou,
Hag en disheol ar Groaz da harpa e zeuio!

I

En eun draouien a Vreiz, karget a c'hliz-veure,
Ter vleuennig dispar a zispake d'an de;
Tri vugelig tener, en hevelep amzer,
A vouz'hoarze ive dindan nerz an domder.

A-gevred gant o c'hresk pep kelennadurez
A sturie o spered e-barz hent ar furnez;
Hag en o ineou, temzet gant tud vad-tre,
Ar c'hredennou yac'h an buhan a ziwanee...

Gant er memez bla, savet er memez bro,
Bet redet a-viskoaz an hevelep parko,
Daoust na gemerchont ket ar memez gwenojen,
Ar garante skoulmas o c'halon da viken.

Ne sonjent ket, marvad, an tri vugel dister,
Pa redent lannou Breiz digabestr, dibreder,
E teurvezche Doue o c'hemer, teir blanten,
Evit ober gante eun dreinded, eun derven'...

Eun dreinded madélez, dreinded louzou dispar
Enep da bep anken, peb ezom, peb glac'har;
Eun derven galloudus, gwriou don, penn uhel,
A zalc'h penn d'an arne, d'an heol ha d'an avel!

Ar mestr bras koulskoude, en e furnez divent,
A lakas, dizeblant, pep-hini war e hent;
Da bep-unan ane, herve pouez e venvek,
Hen a roas skiant ha spered anaoudek...

II

War skoueriou sant Erwan, sant Herve, sant Weltaz,
Ar c'hentan zibabas evit benveg eur Groaz;
Eur groaz! Beleg Doue, pesketer ineou...
Kaeran, uhelan karg en-touez an holl gargon!

Eur Groaz! Arouez a benc'h... Mammenn a garante!
Beleg Doue a zigas ar yec'hed d'an ine;
Hen a zistân pep poan, a lak war bep gouli
Louzou dous ar beden, louzou nerzus ar spi!

Bugel d'ar parkeier evel e Gendadon,
An eil a garo dreist bue frank ar maeziou;
Mestr d'ezan e-unan, roue war an douar,
Netra na dalvezo e benveg: *An Alar!*

Tra ma sanko en Breiz an Alar e zouc'h dir,
Tra ma troo enni bommou ledan ha hir,
Breiz na vezo fallakr; ha, da vras, da vihan,
He douar a rento kant gwech evit unan...

Bet gantan o c'heneu eur spered hunvreer,
Dizeblant, peurvuian, ouz trouz ar bed dister,
E zellou don kollet en-touez koumoul, goabren,
An drived a deulo dre-holl zon e Delen.

(1) Destinée.

E ganaouen dener a skanvao pep bec'h,
E zon karantezus a bellao pep nec'h;
Hag evel dre vurzud, e wezioù da bep den
A vezo diou-askell... Trugare d'an Delen!

III

Telen, Alar ha Kroaz... Barz, Labourer, Belek,
An ter garg dishenvel zo teir garg talvoudek:
D'ar beleg o pedi e fell 'boued: freuz ar boan,
Ha d'ar Gouideg kez eo dleet eun diskân...

Evelse e tremen bue: an tri vugel,
O c'hargou unanet zo d'an dud eurgentel;
O c'henteu eo alc'houez ar gwir eurgentel,
A dle bezan douget gant an holl Vretoned.

O dreinded burzudus: Kroaz, Alar ha Telen,
Skoazel ar c'hrouadur, e c'halloud da viken;
Mar fell d'it, o Breizad, ren da vue hep poan,
Kerz gant an dreinded-man: ped, labour ha kân!

AR YEODET.

Skoliou serret

E verr o serri, en eskopti, ar skoliou oa bet o
hano er c'hazelennou breman 'zo pemzek de:
Saint-Julien hag Allineuc en tu gall, a zo serret,
Corlé ha Carnoet, en tu breton.

Skol gristen Carnoet he devoa c'honec'h ugent
bugel, ha skol ar gouarnamant he devoa eun
dousen. Mes an hini na oa enni nemet daouzek
bugel a chom digor, ha koulskoude, pa ne devoa
kazi bugel ebet, n'e ket hounnez a dleje bean bet
serret?

Tadou ha mammon, setu eno penos e ve plect
ganae'h ha gant ho liberte!

Eur rann-galon eo evidomp, dreist-holl, gwelet
serret skol Carnoet.

Pegoulz 'ta e teuio d'imp sklerijen, ha pegoulz
e santfomp hon nerz, ni kristenien?

HUNVRE JANED GWESKLIN

E kichennek Tifen, gwreg Gwesklin, den brudet,
E kouske c'hoar heman, al leanez Janed:
Al leanez deue, paour kez plac'hig dister,
Da glask eur repu sur 'kichen eun den ken ter.

Mes an den-ze Gwesklin, den krenv leun a galon,
A re neuze brezel pell pell diouz Pontorson,
Epad ma tiskwize ha Janed ha Tifen,
E-barz ar c'hastel bras 'oa 'us d'ar gompezen.

D'ar c'houlz-se dilezet an neuvou, e gastel,
Dre an oabl c'h'e war varc'h an aotrou sant Mikel;
'Vit gwiskamant 'nevoa e harnez lugernus,
Eun tok-houarn a oa war e vleo aour skedus.

Tostât a ra bepred, buhan evel an tân;
Na kaer ez eo gwelet enebour bras Salan!
'N e zorn eur c'hleze tân 'vel eur bann-heol lintrus,
Lugerni brao a ra gant eur gened skedus.

E-kreiz noz an douar, evel eun ezansouer,
A dole goustadik c'houez balsamus en er,
'Keit ma kerze 'n arc'hael dre hent bras ar stered,
Dre 'n ec'honder sioul, tenval ha don meurbed.

Henneu ouz eur galez, ar Menez 'us d'ar mor,
A zave e griben 'tal an islonk digor;
Sant Mikel a stokas, gant e askel skedus,
Ar mein dantelezet eus e dour burzudus.

Daoulammat 're fonnus en tachen skeltr an er,
Tre betek Pontorson ken prim ha luc'hed skler,
'N eun hunvre esllammus Janed welas 'n arc'hael;
'« Traitouraj ha gevrier! a grie sant Mikael!

Janed, sav, ha raktal! ar Zaoz glask traitouri.»
Ar Vretonez spontet n'helle nemet senti,
Balet e tihur prim e kreis kaer he hunvre,
Eus an arc'hael e wel o lufran ar c'hleze.

Dre ar prenestr digor 'tol neuze he zellou,
Glas e teu da vean. War lein ar mugeriou,
Ar Zaozon 'n eur vanden grape war ar mene,
Zoken eus ar prenestr ar gwer i a dorre.

Gant he daouarn dister, ar riskl dre ma kreskas,
Janed eur c'hleze dir timad a embregus,
Raktal gant an arc'hael 'n e c'halon intanet,
Eue ter ar Gwesklin en he c'hreiz 'neus tridet.

Kement e vrezellas Janed, ar plac'hig kez,
Ken res souzan ar Zaoz divergout ha divez;
Ar c'habiten Gwesklin ar burzud pa glevas,
Eus treo ken souezus batet pell a chomas.

— « Ma n'as pige, ma c'hoar, bet kement a galon,
Ne vije bet ar Zaoz boutet diouz Pontorson.»
Mes hi gant he mouez flour 'n eus voutc'hoarzin
(lare:)

« Eus gouedeled ma c'houent 'vidoc'h 'peden Doue.

Ma breur, trugareka an aotrou sant Mikael,
Hen 'neus, e gwirione, difennet da gastel.»

Person Tredrez.

Traou fentus en em gavet.

AMAN HAG AHONT

Nevez 'zo, eur c'homandant a lavars d'e ordren-
nanz: Josef kea da gerc'hat d'in eur pakad butun...
hag illico! An ordrenanz en distro pemp munut
da c'houde: « Komandant, setu ar pakad butun,
mes illico, den n'eus e welet. » Ar ger illico a zo
latin hag a vez implijet alies gant ar C'hallaoued
evit lavaret ober eun dra war an tol, dioc'htu,
prim-ha-prim.

An aotrou Merluch, eus Pariz, eo bet tost d'ezan
en em veuzi e Breiz-Izel e miz eost diveza. En
eur lavaret kenavo da aochou Breiz, eo bet klevet
o toui ne lakje mui e dreid en dour, kent en dije
gouezet neunvi. Hema, da vihan, ne lora ket mui
aochou Breiz, ma 'z eo den a c'her.

Demdost da gear Londrez, e lenner war eur
skritel, e lizerennou bras: Gellout a reer digas
kezeg da heuri er mehad douar-ma war bouez
pea tri shillings d'ar c'hezeg lost hir ha daou
shillings d'ar c'hezeg lost berr. » Unan a c'hou-
lennas digant perc'hen ar hensen, perak daou
briz e leac'h unan? « Ah! eme ar Saoz, n'eo ket
eun dra dies da gompren: ar c'hezeg lost hir a
gas ar c'hellen diwar o zro en eur o skourjeza
gant o lostad reuñ hir, e leac'h ar re eo berr o
lostad reuñ a zo ken gwall-gaset ganto ma ne
beuront gozik tam.

TOLET PLE MAT!

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz
asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar Sa-
voyarde, er penn anei kristenien vat, hag a ra
diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had,
hag en tu-hont da ze a ra paeant eiz gwenneg dre
vil nehentoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a
ro eul loden eus he gouidou da zikour ar veleien
ezommek.

Skrivan da E. AR MOAL (Dir na Dor), a labour
en tu breton an eskopti evit ar Savoyarde.

Ar Savoyarde a ra, ouспен, kement asurans a zo,
asurans tân, assurans tud, assurans loened, hag all.

Ar Savoyarde a glask tud 'vit ober assuransou
en arondisamant Gwengamp. Skrivan da E. Ar
Moal. Gouid mat a vo.

Da gaout gwin mat ha rik, skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez
vrudet: *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

Le Gérant: F. GUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

AN DIES IRÆ

troet en Brezoneg

An de-se 'vo de a gounnar,
Pa vezo dewet an douar ;
David hag ar Zibil hen lar.

Gwasat da spont e c'hoarvezo,
'Wit poezan pep tra pa deüo
Ar Barner bras eus an Nenvo !

An drompilh, gant eur zon skiltruz,
Eus ar beio a rey, fonuz,
D'an oll 'n em gât dirak Jezuz !

Skoet 'vo ar marv ha pep tra,
Pa vo an oll dud en o za,
'Wit respont d'ar Barner brasa !

Eur levr, elec'h ma vo skrivet
Kement 'so, a vo digoret ;
Ac'hane ar bed 'vo barnet !

Pa vo ar Barner azeet,
Pep tra kuzet vo displeget,
Hep kasti 'vano netra 'bet !

Petra a larin-me neuze,
Maleurus ! Da gât piou 'in-me,
Pa 'nevo doan an den mat-tre !

Ho kalloud 'ra krenan, Doue ;
C'houi 'deurve salvi an ine :
Ma zalvet, mammen a drue !

Pet sonj, Salwer an teneran,
'Oc'h 'widon diskennet aman ;
N'am c'holllet ket en devez-man !

Ouz va c'hask 'oc'h en em skuizet !
War ar groaz 'vidon 'oc'h marvet !
Gret ne 'vo poan ken bras kollet !

O Barner leun a lealded,
Jezuz, pardonet ma fec'hed,
Arök de ar varn, me ho ped !

Pec'het em eus, hen göut a ran ;
Breman, gant ar vez e ruian ;
Diganech pardon a c'houllan !

Pardonet 'peus ar Vadalen,
Eus ar laer klevet ar beden,
D'in roet Esperanz kristen !

Ma feden 'zo dister meurbet !
Met mat oc'h, o ma Jezuz ; gret
En tan peurbadus 'devin ket !

Gret ma vin 'tousez an dud zalvet!
Pel-pell diouz ar re villiget,
En ho tu deo ra vin laket !

Pa 'vo an oll dud fall pladet
Hag en tan da leski stlapet,
Davet ar re vat ma c'halvet !

Me ho ped, d'an douar stouet,
Ma c'halon gant glac'har rannet,
Da gât fin-vat ma sikouret !

Devez a daero an de-se,
Pa zavo an den eus ar be
'Wit bean barnet gant Doue !
Pardonet, Doue, d'e ine !

D'an anaon paour, o Jezuz,
Roet diskuiz peurbaduz !

Y. M. G.

IMPRIMATUR :

Brioci die 10^a Septembris 1908,

Y.-M. LE PENNEC,
Vic. Gén.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR CHOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

KUENEROEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourlou).
AR YEODET-BOCHER.

EMBannoù-Konverz ha Koumananchou

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer anezh

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AR GELZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar galleg eo a Vreiz.
FURNEZ AR GELZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het.
Ouspen ar Vez, e ve Pec'he dt
MILIN.

GOUELIOU " BREURIEZ AR BREZONEG "

Ar 25 a viz here gouel Prat.
Ar vugale a zo pedet da digas o c'haierou.

En Plouneve-Moedec 'zo brud e vo gret ive eur gouel aròk ar goanv.

Ar vugale o deus c'hoant da zont en *Breuriezh ar Brezoneg* a renk kemer *Kroaz ar Vretoned*, (eiz real ar bla elec'h 16 real).

Bep a gaier a vo kaset d'e war ar marc'had da skrivan warnan bep sun eun dek pe ugent linen a vrezoneg. Lod o devo, d'o zro, en kement c'hoari-sac'h a vo gret gant ar gouelioù.

Lod o devo ive en ter oferen laket bep bla gant *Breuriezh ar Brezoneg*.

BREURIEZ AR BREZONEG

GOUEL CALANHEL

Hirie 'zo ter zun e oa *Breuriezh ar Brezoneg* en Peurit, en kastel an otro Provost a Lanuay ; disul e oa en Calanhel, en ti an otro person. Beleben ha noblans a ra digemer mat da *Vreuriezh ar Brezoneg* ; mes ken alies-all e tignone d'ei 'n em veskan gant ar goueriaded hag ober he gouelioù en eur c'hranch pe en eul leur.

Ne ra forz gant piou na pelec'h, nemet e hallo dastum endro d'ei kalz a dud, ha, dreist-holl kalz a vugale.

Disul, 4 a viz here, e reas eta *Breuriezh ar Brezoneg* he c'hentan kammed war douar Kerne. An otro Balc'h, person Calanhel, hag an otro Du, eur mignon koz da *Groaz ar Vretoned* en Calanhel, o devoa 'n em garget da ziskoue anei d'an dud, unan krog en pep dorn d'ei. Trugare d'e, rak int a vo kaoz ma e bet digemeret mat. Ar greden start hon deus penôs Kerneviz na chomfont ket warlerc'h Tregeriz, hag en em gemerfont, kentoc'h, 'vit trec'hi warne, pa ouvefont petra eo *Breuriezh ar Brezoneg*. Michans, Kerneviz o deus kement a c'hoant ha Tregeriz da chom Bretoned, da viret war o lerc'h ar brezoneg « enorus » hag ar gizioù a zo stag outan. N'houlfent ket gwelet o bugale o koll anaoudegez o yez, o zud koz, rak an tadou ha mammou a-vreman, ne vo sonj ane en kalon o bugale nemet keit ha m'o devo sonj ive ar re-man eus o bro.

Tol chans a ve, koulskoude, e chomfe ar vugale stag, ouz ar brezoneg, ouz gizioù hag istor Breiz-Izel, ma ne ve den o kelen ane war an dra-ze, hag oc'h ober toull d'e da vont war an hent-se. Goud ouzont lenn ha skrivan brezoneg? Goud ouzont gir ebet eus istor o Bro? Goud ouzont eo ar Brezoneg eur yez dishenvel diouz ar galleg ha kenkouls hag hen? N'ouzont ket, pa n'o deus den da deski d'e. Ar gouarnamant a zo traitour en-kenver ar Brezoneg; n'houl tam diwarnan; en e skolioù e ve desket ankouat ar Brezoneg ha disprizout anean; ar skolioù kristen a zo o vont holl da vean skarzet, just en eur ma kroge lies a hini ane da bleal gant ar brezoneg.

An tadou ha mammou n'hallont ket ober skol d'o bugale war ar pezh n'o deus ket desket o-unan. Ar veleien, goude zikour, a renk da gentan zour-sial eus o c'harg. Piou eta a roo d'ar vugale eur sklerijen bennak war o bro, war he yez? Piou a zesko d'e, ouспен komz, lenn ha skrivan ar brezoneg?

Breuriezh ar Brezoneg a rey al labour-ze, mar he bolante Doue. Pa grogas da vont en parouzioù Treger, arru 'zo tost da daou vla, n'he devoa c'hoaz prenet tam skiant ebet; n'halle ket lavaret : « Me oar eo mat ar pezh a ran. Deut d'am heul hep aon ! » Breman n'eman ken kont memes tra. Mesket he deus gant an dud; gwelet he deus da betra e talv ar boan a gemer hag an arc'hant a dispign; setu perak e stag ive breman da labourat en Kerne, o vean sur eus he zol; o vean sur he deus peadra 'vit ober ar vad.

Ya, deski lenn ha skrivan ar brezoneg, e yez, a ra kalz a vad d'eur bugel.

Lenn ha skrivan brezoneg a ro kalz a lans d'ar bugel da lenn, da skrivan, da gomz ha da intent ar galleg. Betek breman, avat, an dra-ze na oa bet anaveet hag anzavet na gant tadou ha mammou na gant mestroskol : kentan tra a re ar mestroskol evit deski galleg d'ar vugale, 'vije chabouchat ar brezoneg diwar o zro. Ar galleg hag ar brezoneg a oa evitan 'vel daou enebour, an eil oc'h ober brezel d'egile. Ha koulskoude, petra re oc'h argas ar brezoneg diouz o skol, o harz ar vugale da gomz na da zonzal er brezoneg? Dallan ane 'vit ober d'e gwelet sklêroc'h; troc'han d'e o zeod 'vit ober d'e komz gwelloc'h. Ar brezoneg a zo mignon d'ar galleg; ar galleg na vo gwech ebet gwelloc'h digemeret en spered ar bugel, gwelloc'h intentet, komzet ha skrivet, 'vit pa vo bet ar brezoneg o tigi d'ean an nor; da laret eo, ar galleg a vo desket seul-welloc'h ma vo bet desket da gentan ar brezoneg.

An tadou hag ar mammou a dle eta kredi start e rento *Breuriezh ar Brezoneg* kalz a zervij d'o bugale da zeski ar galleg; red eo d'e lakat don en o spered penôs ar brezoneg a zo mignon ar galleg hag int gret o-daou 'vit 'n em zikour. Neuze 'ta, tadou ha mammou Calanhel, hag ho pa laket ho pugale da zont da lenn disul en *Breuriezh ar Brezoneg*, kemeret d'e breman *Kroaz ar Vretoned* 'vit eiz real ar bla, rak anez-se ar gouel na zervije da netra. Neuze, da vla, vo adarre eur gouel kaeroch, a dra zur, evit an hini disul, rak muioch a lans a vo da bleal gantan.

N'haller ket laret koulskoude ne oe ket brao ha dereat ar gouel disul. Eun tri c'hant a dud, pa veint unanet a galon, a ra ken brao gouel ha tri mil dastumet a-gle hag a-zeou hep liamm na dalc'h ebet etreze.

Soniou ha prezegen Ar Yeodet a gemeras al loden vras eus an amzer; mes ar brezegen a oa kaer, ar zoniou a oa fentus, ha den na gavas da laret e oant re hiir; ar c'hontrol eo. Daou bôtr yaouank eus Plounerin deut gant hon mignon, an otro Kerven, a ganas pep a zôn, an *Durzunel* hag ar *Weren*; an hini diwean a zo moulet hirie war *Groaz ar Vretoned*. Chom en Breiz-Izel, gant Ar Yeodet, *Kousk*, *Breiz-Izel*, gant mab yaouankan an otro Du, a blijas ive-meubed d'an holl. Ne vanas sôn ebet ane da werzan. Marc'hadourez vat a yei bepred ermeaz, dreist-holl pa vo

tud dilu 'barz ar stal. Aman hon doa kavet gwerzerien ha gwerzerezed eus an dibab. Trugare dreist-holl d'hon mignon Roc'hlan ha d'egenvreur; n'o devo ket roet o foan 'vit netra; me zonzj, er bed-all, o devo induljansou.

Ar prijou, a gredan, a lakas an holl laouen. Mes an tombola, daoust ma oa manet bilhejou da werzan, a lakas sart bihan ha bras. An tad-koz gant e gorn-butun, ar vam-goz gant he c'ho-nifl, a oa ken fars an eil hag egile. Mar c'honeas hiniennou eus ar merc'hed pakajou butun, gant ar bôted ec'h eas ar spilhou...

Setu achu ar gouel, dister a-walc'h, gwez d'Ar Yeodet, mes red 'zo eur c'homansamant da bep tra. D'ar vugale breman da danzen 'benn ar bla eur gouel-all kaeroch, 'n eur deski kanan ha c'hoari peziou. Evurus omp o sonjal o deus d'o ren ha d'o c'helen an otro Balc'h, an hini omp dleour d'ean, an tol-man, eus hon holl anaoudegez vat. Gant se, da vla, me gred e welfomp neventi.

DIR-NA-DOR.

SON AR WEREN

Ar pezh a ren war an douar,
'R pezh ra ganiup evel ma kar,
'R pezh a c'houarn breman ar bed,
N'eo na Doue na den ebet,
N'eo na lezen, na gouc'hemen,
'R pezh heu gouarn eo ar *Weren*.

Mar klevet awecho embann
E ve kollet e zaoud gant Yan,
Mar ga a-bell evit o c'hilask,
Hag i er ger stag ouz o nask,
Mar gwel en du ar pezh 'zo gwean,
Petra 'zo kaoz 'met ar *Weren*?

Ma oar meur a wreg tiegez
Trei he aman, he uo, he leaz,
En gwin-ardant, ha dont d'ar ger
Diouz ar marc'had didavanjer,
Mar lavar goude 'deus droug-penn,
Petra 'zo kaoz 'met ar *Weren*?

Mar ga noade ar c'hemenet
Gwelloc'h 'n e fri 'vit er mezer,
Ma lak an tam 'kichen an toul,
Ha ma 'man riboul-diriboul,
O font, o vont war e dorchen,
N'eus netra kaoz 'met ar *Weren*?

Mar ken daouarn ar micherour,
Mar be ken lies dilabour,
Ma renk e wreg mont d'e gerc'hat
En eun davarn ken diwezal,
Daoust ha ma sko ganti ouспен,
Petra 'zo kaoz 'met ar *Weren*?

Ma n'eus tam tan war an oaled,
Na tam bara war an daol voued,
Ma varv e wreg, e vugale
War c'horre plouz yen o gwele,
Gant ar baourente, an anken,
Petra 'zo kaoz 'met ar *Weren*?

Mar da kement da glask bara,
Goude bean bet peadra,
Ma ruilh ar pinvik 'barz ar poull,
Ma werz ar paour e vrigo toull
An eve bet en aluzen,
Petra 'zo kaoz 'met ar *Weren*?

Ma ve trouz etra daou bried,
Antronoz devez o eured,
Mar sko ar bugel gant e vam,
A ro d'ezan ar gwellan tam,
'N despet d'he oad ha d'he bleo gwenn,
Petra 'zo kaoz 'met ar *Weren*?

Joseph PAUL,
kemener, Plounerin.



AL LOUZAOUER KEZEG HAG E VEVEL

Ar marc'heg Kornboud, o welet e eil gonje en Arme o vont da benn, a zonzas chench micher. Ar pez a c'hoantez, e oa kaout eur gargig eas, e leac'h n'en dije bet, koulz lavaret, netra d'ober. En aviz-se e c'houlennas beza ordrenanz. Roet e oe d'ezan e c'houlennas Penraden, eil louzaouer kezeg eus ar rejimant, her c'hemeras en e zervij. Kornboud a dridas gant al levenez vras a oa en e galon. Oc'h e glevet, eur marc'heg koz a lavaraz d'ezan : « Bez war evez, al louzaouerien kezeg o deus o finesa ». — « Bah! gallout a rin tanva e win, butuna eus e zigarennou ha me oar petra c'hoaz kouls d'in-me ha d'ezan da gaut. »

An devez kenta, kaer en doa bet furchal ha c'housat, n'hellas ket dont a-benn da c'houzout pe leac'h e kloze Penraden e evaj, hag e oa eun tammig tenval e benn diouz an noz. Antronoz, dre hir-evesaat e welas anezan o tigi eun arbel ha teir renk'ad boutailhou ebarz hag holl brasoc'h an eil eget eben.

— « O! gwellaat a ra an traou, eme Kornboud, ennan e unan, aze e rank beza traou mat, en arbel-ze em a gao. » — « Kornboud, eme al louzaouer kezeg, deut ama... ne stoket ket ho torn ouz ar boutailhou-ze; bez' ez eus enno louzeier, ampoezon; dalc'hit sonj mad eus ar pez a lavaran d'eoc'h. »

Penraden, o veza eat war dro eul loen klanv, Kornboud ha mont ha digeri an arbel. Ouz pep boutailh e wel stag eun tam paper merket warnan ar ger *ampoezion* e lizerennou bras. « Gwaz a ze, emezan, ez eus ar boutailhou-man holl ampoezion evit louzaoui ar c'hezeg! » Setu a nevez tenval e benn. « Daoust, emezan, ha me welfe pe seurt c'houez a zo gant ar pez a zo er voutailh-ma? » hag hen d'he distoufa kempenna ma c'helle. Tra souezus! c'houez ar « rhom » a zeu eus ar voutailh skrivet warni : dour vitriol, ampoezion krenv. Mes ne oa ket tost d'ezan hen tanva; lakaat a reas ar voutailh el leac'h m'edo arok hag hen mont da zira e voutou d'al louzaouer kezeg, trist evel eur boned-noz. Netra ebet da eva, ha sigaren ebet da vutuni, rak Penraden na ouie ket butuni! Pebez ran-galon! Eat e oa en e benn mont kwit eus a zervij al louzaouer kezeg a wele o kemer bemdez eur werennad eus an ampoezionou-ze. « Red eo, emezan, e ve klanv an aotrou : abalamour da-ze, m'oar vad, eo nevez deut eus Madagaskar; e leac'h en defe paket eun derzien bennak. »

Eun devez eun itron gwisket kaer a zeu en ti hag a c'houlenn gwelet an Aotrou Penraden. « Plijet ganeoc'h antreal er zal-ma ha me 'zo o vont betek an aotrou. » An aotrou na zaleas ket da zisken. Eur wech serret dor ar zal, Kornboud na zaleas ket da zont betek an nor ha da zellet dre doull an alc'houez.

A-benn eur pennadig amzer e wel dor arbel al louzeier o tigi hag e dorn Penraden eur voutailh skrivet warni : Poison foudroyant, ampoezion tanfoeltrus. « O! emezan, eman al louzaouer o vont da ampoezion an itron ». O veza leuniet diou weren eus an evaj e stoket ar gwer ha pep-hini a ev a nebeudou eus e weren. « Mat lipouz eo ho penedictin », eme an itron d'an aotrou Penraden. « Ah! ma em eus skrivet ar ger ampoezion war an tu-ma eus ar voutailh, eme an Aotrou, eo evit na zeufe ket va ordrenanz d'hen tanva. » Kornboud ospen ma welas, dre doull an alc'houez, a glevas ar chomzou-ma dre ar memez hent.

Eun deiz bennak da c'houde, Penraden o kemer eur banne eus ar voutailh « ampoezion tanfoeltrus » a oa enni Benediktin, a daolas pled e vanke al liou ha zoken ar blaz hag e frizas e voustachou.

— « Hum! hum! Petra d'ober, emezan, outan e-unan; gwelet e vezo e pe du e vezo ar c'hoarz diveza. » Setu hen da di an apotiker ha ken buan hag all en dro. « Hirio, emezan da Gornboud ez an e permission ha deut e vezo arc'hoaz d'abar-daez, m'oar vad, a-benn ma teuin en dro. Dreist-

boll tolit evez, Kornboud, ma douchfec'h ouz ar boutailhou ampoezion. » Kornboud a oa eun den hag a gare lodenni gant ar re-all. O veza kavet war e hent Finmar ha Beroheol, o fedas da zont en ti da gemer beb a vanne likeur. O veza en em gavet er zal-dibri e kontas d'ezo istor an ampoezion a oa an arbel. An daou-ma n'heljont ket miret da c'hoarzin forz, ken na oa darbet d'ezo noazout ouz o bouzellou. Kornboud a lak teir gweren war an dol ha dao beb a vanne, ha beb a vanne c'hoaz da yec'hed ar perc'henn, bep tro gant ar vrasa laouenedigez. Abarz ar fin, Beroheol a lavaraz : « Tra a-walc'h eo koulskoude evit eur wech. » Finmar a chenj e liou en eun taol kont : « N'ouzont ket petra eo, emezan, mes n'ez a ket mad an traou ganin. » « Ha me ive, eme Beroheol, me zant em eus poan galon. » « Ha me, eme Kornboud, me zo o vont gant va hent, santout a ran eur boan gof souezus; ampoezion e rankomp beza evit doare hon tri! War an taol setu Penraden dirazo ebarz ar zal. Goude o c'hlevet o klem, o krial edont ampoezion o zri, al louzaouer kezeg a lavar d'ezo :

— « Kemerit eun tam pasianted, me zo o vont d'ar red da glask unan d'ho para. » Eun eur goude Penraden en em gav en dro, mes ha gant eur medesin pe zaou edo? N'e ket, mes gant ar pennon bras eus ar Rejimant. « Gwelit, aotronez, eme Penraden, betek pelec'h e kas an eva-re hag ar mank gouzout beva. Setu aze tri ganfard hag o deus en em ampoezionet oc'h eva eus va likeurion; mes n'eus ket hano evito da vervel en drama : peadra avad da roi d'ezo eur spurj e doare em oa lakeet er voutailh e-mesk ar Benedictin. Esper am eus e talvezo ar gentel d'ezo o zri evit ar rest euz o buez. »

War-ze an tri ganfardig kez,
E-kreiz an hu, ar c'hoarzerz,
Lostok 'vel tri louarn kannel,
D'o c'harter 'zo en em dennet.

J. C.

BUE HA MARO PITIBIAN

E vam a oa danserez;
E dad a oa mevier...

— Pitibian, paour kez kamarad, o vont da vez e oas ken beure?

— Ya, me Pitibian.

Pitibian an evoa dek vla, tost da unnek, emean; da vla oa d'ober e bask; mes da welet, n'an evoa ket en tu-hont da nao bla. E zionhar oa chomet ken berr ha ken moan, e izili ken kasti!

Ar boan hag ar baourante o devoa harzet anean da greski, 'vel pa vije bet laket eur men d'ean war e benn adalek an de ma oa ganet. Eun drue oa gwelet anean o vont gant an hent gant e vioc'h, ar vioc'h lard, uhel ha pounner, hag ar pötrig warlerc'h ken trent, ken munut ken bihan ma oa bet galvet gant an dud Pitibian. Pa vije drek ar vioc'h, ne vije gwelet tam anean, 'c'han klevet eur vouez voan skwiz ha brevet o huchal :

— « Ei do, !Pen-briz! » hag e vije gwelet neuze Pitibian o lispakan a dre lost e vioc'h 'n eur ruzan e votou koad hag 'n eur grigant eur c'hoz tam bara sec'h, e lein pe e vern, 'vel ma vije.

Paour kez Pitibian! E vam, gwaz d'ar zón, a oa danserez, hag e dad oa mevier, ha Pitibian oa merzer gante. Nag a wech an evoa glevet e vara zec'h gant e zaerou a vogel! Nag a wech an evoa tremenet hep e dam bara d'e lein pe d'e goan hag an evoa kemeret avi ouz e vioc'h; houneuz da vihanan, pan hallje peuri ar yeot, vije bepred mat ar bed ganti.

Nag a wech, goude bean bet savet da beder eur beure, da vont da vez, e oa manet kousket en henchou hag en anchou, ha dihunet gant mouez garo e dad o c'hervel warnean :

— « Pelec'h eo et da vioc'h, mil malloz? » Nag a wech, gwaso c'hoaz, e oa bet dihunet gant an tollion treid, e gosteou blonset, e zionar duet!... Koulskoude n'an evoa nemet, dek vla. Da zek vla, eur bugel ne ve ket tout an nerz o heuilh anean. Da zek vla e kaver mat e hun da veure; da zek vla e kaver mat e lein, e hadlein, e veren, e had-

veren hag e goan. Da zek vla, e kaver mat, dreist-holl, pok eur vam hag eun tad. Mes Pitibian na oa ket, herve, diwar ras ar vugale-all; da beder eur e vije savet an hanv ha da bemp eur ar goany; daou bred pato bemde pe bara zec'h a oa trawalc'h evitan; n'an evoa ket a zonz da vean bet biskoaz nag eur pok nag eur gomz karantezus.

Koulskoude, Pitibian a chome beo. Ar vugale-all a gresk, a larta, a grenva; Pitibian oa trawalc'h d'ean chom beo hep komz a greski nag a grenvat. Mar 'n evoa tapet tri lur ha daou-ugent ha daou droatad hanter, e oa hep goût d'e dad ha d'e vam; breman, avat, 'n evoa e gont. Paour kez Pitibian!

An de-se e tremenas du-man wardro peder eur hanter, en eur jilgammat warlerc'h e vioc'h.

— Kam out, Pitibian?

Hag hen, en eur zevl warnon e zaoulagad glas ha ledan, ken trist ha ken dous :

— Ya, emean, ma zad 'n eus roet eun tol troad d'in!

— Deus ganin betek an ti!

Dont a reas 'n eur jilgammat ha 'n eur gignat eur c'hoz tam kreun ken kalet hag eur men.

— Dal, debr an tam zoub-se, ha kas ganit an tam bara hag an tam kig-man!

Sellet a reas gant eun er souezet, eun er da lavaret : Me grede d'in penos ar vuc oa bevan gant bara sec'h ha tollion treid.

— E-berr, emean, pa dizroi, 'fo kemend-all. Ne grede ket kemer ar bara. Pa lakis anean d'ean en e zorn, ne reas van ebet; ne lavaras netra, nemet mont ermeaz warlerc'h e loen. Ar vioc'h he devoa dalc'het da vont. Hen a chomas nec'het bras, 'n e zav, da c'hdal; goude bean gret eur zell endro d'ean, e tec'has 'n eur redek war gres'h gant an hent, tresek e bark, ankouaet gantan 'n evoa kig ha bara 'n e zorn hag ankouaet gantan oa kam.

Bep abarde-noz, mam-goz a oa kustum da zeski o fedennou ha d'ober katekiz d'ar vugale diwardro. Pitibian a devea awechou. An noz-se e welis anean etouez ar re-all.

— N'out ket deut da glask bara ha kig d'az hadvern?

— Nan, emean, ma zad n'houle ket.

— Perak n'houle ket da dad?

— Laret a ra ne 'n eus ket ezom a gig.

— Debret 'teus an tam 'foa bet 'vit ar beure?

— Ma zad 'n eus debret anean.

— Da dad?

— Ya, ma zad 'n eus muioc'h ezom a gig evidon.

N'ouzo c'h ket, ma zad a renk labourat?

Chom a ris dilavar. Ne ouien petra da respont.

Arro oa e dro da laret e gentel.

— Pitibian, eme mam-goz, gret ho sin ar groaz.

Pez a blijie d'an ar muian en e dam bue, oa laret katekiz ha klevet kanan kantikou. Hen na oa ket evit kanan. N'an evoa mouez ebet. Pa oe achu ar c'hatekiz, mam-goz a c'houlennas digantan :

— Petra vo kanet fenez, Pitibian?

— Sant Jozeb, emean.

Bep gwec'h, pa deve, 'vije red kanan sant Jozeb.

Hag int da ganan, eiz pe nao asambles :

Sant Jozeb, pried Mari,
Tad mager da Jezuz :
Ni fell d'imp hoc'h enori,
Patron karantezus.

Ma zell a oa war Pitibian. E vuzellou a finye, mes ne deve mouez ebet eus e c'heno. E zaoulagad digor bras a oa skler ha lugernus evel eur banne dour en eur weren, pa sko an heol warnean.

Mantrus oa gwelet anean munut evel ma oa, gant e dremm distion ha skarzet, e vleo melen evel al lin, endro d'e dal liou ar c'hoar...

Menel a ris da zonzal ha da glask 'n em spered perak e chome war an donar eun innosant ken didamall ha ken gwalleurus.

Perak ne oa ket et gant Doue adalek e glemmaden gentan? Souden, eur zonz a dreuzas ma spered 'vel eul luc'heden : « Ar bugel-man a zo en pinijen 'vit e gerent ha marteze 'vidomp holl.

Biskoaz 'n eus tanvaet gant ar vuc nemet eur viaz trenk ha c'houero; biskoaz gant joa, biskoaz plijadur 'n eus bet abeurz an dud : e gerent a zo drouk en e genver, an dud a zo dizeblant ha kri.

E lod a zo gouzanv, ha goude gouzanv, mervel, pa vo deus an eur.

An nosvez-se, rôk mac'h eas d'ar ger, e rois d'ar potrig eur pezh pemp gwenneg da gât e lod 'benn ar zul warlerc'h. Ne reas ket mui a van eus an arc'hant 'vit n'an evoa gret eus ar bara. 'N eur arrouet er ger, e roas an arc'hant d'e vam, gwerz eur banne oustpeneviti.

Nebeut amzer goude kement-man, e soujis ne welen ken Pitibian. Goul a ris eus e golo gant eur c'hannard, e amezeg.

— 'N e wele 'man, 'me ar pôtr-se.

— Gwall-glanv eo?

— Me n'ouzon ket; gorron 'zo gantan.

Goude ar respont ken dibalamour, ar c'hannard a yeas 'n e dro, 'n eur c'houitellat.

Me a zonzas mont betek ti ar c'hlanvour.

Allas! biskoaz ne 'n em gavis ken mantret.

War eun tam plouz, gant eur werennad dour 'n e gichen, oa astennet ar bugel. Ne oa nemet ar relegou anean. N'aveis nemet e zaoulagad glas ken dous ha ken trist hag e vleo melen war e dal liou ar c'hoar.

Ar peurest n'an evoa ken na stum koz, na stum yaouank, na stum man ebet, nemet stum ar maro. Trei a reas tresek d'in e zellou hag e lavaras dre e alan:

— Ar c'hantik! ar c'hantik kaer!

Neuze, e serras e zaoulagad hag e reas kazi 'vel eur mousc'hoarz. Biskoaz na 'm oa gwelet anean o vousec'hoarzin. Neuze 'ta, ne oa bet netra en e vuez nemet ar c'hantik-se hag an evoa skuilhet en e galon eur berad levenez?!

Dont a reas da zonzj d'in e oa o chom, en kichen, eur plac'hig hag a gane mat kantik sant Jozeb. Mont a ris d'he c'herc'hat.

— Mari, kan da Bitibian kantik sant Jozeb!

Ar plac'hig a grogas gant an diskan, ha goude e kanas eur c'houplad. Mes souden, ar vam a loskas eur c'harmaden.

— Tavet 'ta, emei, 'welet ket e laket anean da vervel?!

Gwir e oa. Ar c'hlanvour an evoa zerret e zaoulagad, mes war e dremm e welen ar sklerijen-ze a hare 'n e zellou nosvez ar c'hatekiz; e liou a deuas gwag gwag, 'vel pa vije eur golo o vervel en e ziabaz.

— A ma Doue! eme ar vam.

Kerkent, e zaoulagad a zigoras ledan, skler, ingernus: ar baradoz a oa enne. Ober reas eun huanaden verr, ha Pitibian a dremenas en eur vousec'hoarzin.

Ar vam — breman! — a dirollas da ouelan. Vidon-me, daoulinet e-narz treid ar bugelig, a chomas eno pell pell, beuet ma spered en eur mor a zonzjou.

A. M.

AR GER VILLIGET

GANT

LAOUIK

(KENDALC'H)

II

D'ar mare-ze e c'hanas d'ê eur mab, kalz a frejo o devoe ha kement-se a raes d'ê sellet tostoc'h c'hoaz. En aer ampeezoned an ijinerez, hep ar bevanz emad he devoe ezom, he bried na bareas ket ervad. Ret e oa d'ei, eur pennad goude, mont da dremen tri miz d'ar ger gant he bugelig, dre urz ar medesin.

E-pad an amzer-ze, fanch ac'h aes da zibri en ti ar marc'hadour gwinn a oa tost d'ean o chom ha kement-se a raes e waleur. Da gentan e tizroe d'ar gér 'dal m'en nize debret, med pegen trist e kave e gamprig neuze! Pegen yen e vije pa digouee diwar e labour, skuiz goude eun devez pe eun nozvez poan!

Na wele ken mousc'hoarz dous e bried a gennerze anean; na gleye ken he mouez karantezus; ne vijeken oc'h evesaat war e gousk nag o tiar-benn e zonzj evit rei d'ean kement en nize ezom da viret e nerz ha e yec'hed.

Dont a raes da veza tenval; evit ankoaz e dris-

tidigez e kustumas a dam da dam chom e ti an hostiz d'evan eur bannac'h da c'hortoz mont da gousket.

Daou zen yaouank, a labour e gevret gantan, a debre ive er memez ti. Ar re-ze a gemere o flijadur, 'vel eman ar c'hiz da laret pa ren an dud yaouank eur vuez digabestr. An arc'hant a c'honeant a veze dispignet oc'h evan, o vont d'an teatro ha d'an danso noz. Tud joans e oant ha konterien gaer. Fanch a deuas da gaout ber am amzer en o c'hompagnunez, rak gante e teue a-benn d'ankouaz e zrouk-hirnez evit eur pennadig.

Kustumi raes dibri ouz ar memez taol gante; o vont d'o labour hag o tizrei diwarnean e vijent a-gevret ive, ha, hep dale Fanch a wele lies a hostiz a-rôk digouezet er ger.

Pa arvue eul lizer digant e bried, pe otramant pa diskenne enuan e-unan, e gonsians a rebeche anean; santout a re pegen risklus e oa ar pleg a gemere; c'hoantaat a re stourin evit hadkouean adarre.

'Vit dizrei war e giz e vije bet ret d'ean laret ar wirione d'e bried ha gervel anei davetan: na c'houle ket hen ober dre lorc'h.

— Petra 'soujo diouzin mar laran ar wirione d'ei, a zonzje, ret eo d'in 'n em distagan diouz ar vignoned-ze ma-unan.

Pa douchas e bas an eil miz ma oa et Anna da Vreiz e oa spontet o welet ne chome hogozik gwennek ebet gantan goude bean paeet e skoden en ti an holl hostizien a dlea arc'hant d'eze. Kement-se a raes d'ean ober hep sort soujo ha bean oa evit skrivan d'e bried: diaoul al lorc'h a harzas outan adarre, ha ret eo laret ive e oa krog an evach da deurel gwrienne en e galon.

Etretant e nerz a dec'h e. Ze na oa ket souezus: eun den ha na ra dizurz ebet an neus a-walc'h d'ober da viret e yec'hed er vicher an nevoa 'n em laket; nag en desped da ze mar, gra anei eun nebeut blavezio, ar c'hlenvejo a goueo warnean a bep tu. Ret eo bean gwelet bue ar fornieren 'n eun ijinerez gaz evit gouzout petra eo.

(Da heuilh).

LAOUIK.

Fentigell

JANI (o tigouezout en ti, ha ganti war he fenn eur pezh tok ledan ledan nevez-prenet en eur « bazar » judeo bennak). Sellet, moereb, pegen kaer eo an tok nevez-man war va fenn!

AR VOEREB (oc'h ober krampoez, hag en he c'hichen, Pichig-kaz-ru, ar c'haz, o lipat e bas war gorn an oaled). Ya, va flac'h kez, ken kaer ha pa vije lakaet va fillig-krampouez war penn Pichig-kaz-ru a zo aze!

KELEIER EUS AR BED-OLL

Ar presbitoariou. — Ar ministr Briand 'n eus skrivet eul lizer d'ar brefeded o laret d'ê kas ermeaz eus o fresbitoariou ar veleien n'o deus ket gret a feurm.

Hogen piou 'zo kaoz ma n'eus ket gret a feurm? Ar prefed, pa ne gav ket d'ean gwech ebet e c'houller ker a-walc'h gant ar person.

Eus eun tu-all, ar prefed, herve al lezen gret arlene gant Briand e-unan, n'hall ket kas ar veleien ermeaz o fresbitoariou nemet hag ar meriou a c'houlennefe.

Ar ministr eta a ra gwap war an dro eus e lezen hag eus ar meriou. N'eus forz; gantan vo 'n trec'h, rak en e zorn eman an nerz.

Bueou Paris. — Eur Breton hag eur Vietonez et da Bariz, hag e oa bet, koulz a oa, komzou a zimezi etreze, a 'n em gavas an deou diwean.

Mes ar plac'h a oa dimeet d'eur Breton-all eus ar Finister evelti, ha d'ei daou vugel. N'eus forz, ar c'hamarad gwechall a fellas d'ean ober e vestr, kement ha ken bihan ken dilun e tennas war ar plac'h ha lazan ansi. Goude ze, en em dennas e-unan.

Ha setu eno eur skoner eus bucou Paris.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KEENE-UHEL

BEAR. — 'N em grouget. — François Guélon, eus Tregrom, a oa chomet da lojan ar zun-all en ti Benez'h, hostiz en Bear; klanv e oa. 'Benn an de warlerc'h oe kavet krouget en kraou ar zaoud.

GWENGAMP. — Foar ha marc'had. — Foar Vikel a zo bet krenv a-walc'h disadorn. Gant an amzer gaer e oa deut kalz a dud hag a loened. Ar c'hezek a yee mat, hep bean koulskoude kement a glask warne 'vel ma oa en Boulvriak, de foar ar 6 a viz here.

War ar moc'h, bihan ha bras, 'zo kalz a disken. 'Vit 35 lur e c'helled kat disadorn eur vro a gouplad moc'h.

Marc'had an avalou, disul, a oa kont gantan evellen: ar c'liant avalou a yee betek 18 real. Ar briz a zo 16 real.

Koll. — Eur wreg o chom wardro Gwengamp deut da werzan eun anevad kezek disadorn d'ar foar, evit paeen he gouel-mikelez, he deus kollet ar pemp kant lur he devoa bet 'vit he loen.

PLOEZAL. — Jani hag he zok. — Jani, ar wech-man, a zo hec'h hano Henriette, ha ken penfollet e oa gant ar c'hoant d'eun tok, hag oustpen d'eur montr ha d'eur « parapluie », ken he deus laeret digant he mestrez, an itron Liberge, en Gwengamp, daou bez aour ugent lur. Abalamour d'he oad — n'eo nemet seitek vloaz — Henriette n'eo ket bet kondaonet. En han Doue, m'c'hed yaouank, diwallit diouz ar ficherezh, a gas pell evel ma welet. Ha c'houi, kerent, dalc'het evit ho pugale da wishmant ar Vro, a raio sikour da viret ane en hent ar furnez hag an onestiz.

ROSTREN. — Goude ar votadeg. — An otro Cazin d'Honinctun a drugareka en brezoneg tud e vro hag o deus hanvet anean kuzulier departamant.

Ma c'henvroiz ha ma mignonned ker,

A drugare Doue, n'oc'h ket bouar na dall!

Dre forz bezan gwasket, gwapeet ha disprizat, oc'h deut da welet skler. Dre ze, ho pens kaset ar Vloekard da stoupa.

En eur rei ho mouezioz d'in, ho pens laret d'ê oc'h skwiz gant ar brezel diskiant gret d'ho kvendennon ha d'ho Pro, hag e fell d'ac'h peuc'h ha labour evit mad ar bobl.

Drugare eta a greiz ma c'halon!

En amzer da zont, e chomin en ho kenver ar pezh oun bet en amzer dremaet: eur mignon mat hag a lako bepred e hoan da zikour e genvroiz ha da zifenn kanton Rostren.

Bebet al liberte!

A. CAZIN D'HONINCTUN,
Kuzulier departamant.

En pep doare e haller lavaret:

Evelse eo komz!

SANT-SERVEZ. — Tàn-gwall. — Diriou da noz, an tân a zo bet kroget en ti Flohic, en Sant-Servez. Ar wreg a hallas nemet kas he bugale ermeaz an ti; raktal e koueas an doen. Daou 'vil lur koll a zo. Ne oa netra asuret.

SANT-NIKOLAS. — Torfetourez. — Gwreg eur boureler eus Sant-Nikolas he deus roet d'he den eun tol kontel en e gof. Serret eo en prizon Gwengamp.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

E GWERZ: Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

BEZAN E VO BREZEL ?

Biskoaz fentusoc'h ! P'eman an holl rouanteleziou o klask an tu da vouga ar brezel ; p'eman « P'otred ar peuc'h » o laret ez omp re skiantek, re fur, ha n'hall brezel abed strakal en eun amzer ken sevenet hag an ugentvet kantved, e welomp o sevel en bro ar Sao-Heol tabut ha trouz.

En kement-man ar rouanteleziou hag ar poblou a zo henvel ouz an den a c'hoanta diarbenn ar bec'h en eul laret n'an eus aon abed p'eman ar gwasan spouren o ren en e ziazar...

Bezan e vo brezel ?

Setu ar pez a c'houlenn an holl gazetennou eur pemzek de zo. Evit gwir, digare kalz a zo da gavout doan rak ar brezel.

Goude bezan bevet pell dindan gazel-gé an Durki, e welomp eur bobl vihan eus bro ar Sao-Heol oc'h en em sevel hag o lavaret eo mestr d'ezi he-unan : pobl ar Vulgari.

Petra bennak e ver souezet o welet eur bobl vihan oc'h en em zvel ouz eur bobl vras, pa ve sellet tost, ar Vulgari he devoa digare d'en em zistaga diouz an Durki. Daoust da Emgleo Berlin, bet er bloavez 1878, hag a stage anezi, a lake anezi dindan domani an Durki, ar Vulgari na wele ket perak e chomche dalc'hmata dindan treid an estren, pegwir ar prinz a oa karget da ren anezi en hano Sultan an Turki, na c'houle ket well evit kerzet gant Bulgariz ha bezan d'e dro roue elec'h mevel.

An dra-man a oa seul ezetoc'h d'ezan ma oa karet ha doujet kalz gant e zujidi. Gouezet en doa an tu da c'honit ané dre e vadelez, dre e furnez ha dreist-holl dre e garante vras. Ne glaske eta evit ober e dol nemet ar c'hentan digare.

An digare a zo bet deut diwar-benn henchouhouarn ar Roumeli (eur vro vihan-all stok ouz ar Vulgari), a oa renet gant an Durki. Sevel a reas eur « grev », pe eun diskrog-labour, war an henchouhouarn-man hag en nebeud amzer ar viche-rourien reveulzet a drailhas kement eus kirri an hent-houarn, ma vanas re nebeut evit ezom ar vro, hag, evel just, an holl en em glemme. Ar Vulgari a zifennas doare ar vro hag a gemeras renadurez an henchouhouarn e lec'h an Durki.

Aman eman tól-fin ar Vulgari, rak n'he devoa kemeret galloud war an hent-houarn nemed evit kavout an digare kentan d'en em zistaga diouz an Durki.

— A-walc'h, awalc'h a gazel-gé evelse, eme ar prinz Ferdinand ; pell 'zo a-walc'h ez omp o c'houzan... Poent eo d'imp sevel hon fenn evit mad !

Eus eun tu-all, Bulgariz na glaskent ket well, ha pa glevchont e tostae devez o frankiz, e kreske bemde o levenez. An devez kaer na daleas ket pell ; ar 5 a viz here, tremen eiz de aboue dilun, eo bet diskleriet ar Vulgari eur vro dishual ha digabestr. Ar roue hag ar rouanez neve a zo bet digemeret en ker *Tirnova* gant eur levenez vras. Bemde aboue e tigoue gant ar roue neve hag e bried, dre gant ha kant, al lizerou a c'hourc'hennou mad hag a vue hir.

Red eo laret penôs ar roue neve a zo eun tam bugel ar Franz ; bezan eo mab bihan da Loeiz Fulup, hag e wreg, ar rouanez, a zo merc'h vihan da Charlez X. Bezan int o daou bugale da zaou diwean roue Franz, ha gwad nerzus hon bro eo a ruilh en o gwaziou.

Petra lavar breman an Durki diwar-benn ze ? Darn a lavar e tisklerio brezel d'ar Vulgari. Darn a lavar e klasko rouanteleziou an Europ da varn displealded ar bobl trubard. Eus o zu, rouanteleziou an Europ a zo seul nec'hetoc'h m'o deus holl kalz pe nebeud a interest en bro ar Sao-Heol.

An Aotrich-Hongri a deul e lagad war ar Vosni, an *Herzegovin*, diou vro hag a stok ouz ar Vulgari, hag a zo dindan an Aotrich evel ma oa ar Vulgari dindan an Turked. Ar C'hrêt (eur vro vihan-all) a garfe ive 'n em lemmel eus diadan pao an Durki evit 'n em rei d'ar C'hrès. Bro-Saoz, an Itali, an Alamagn o deus kalz da welet ebarz aferou an Durki hag o gonidou, o interestou

kemmesket a gerz alies a-enep. Petra d'ober neuze ?

Ar Franz, ar Rusi ha Bro-Saoz a garfe kavout eur C'hendalc'h bras (Congrès) evit reizha pep tra. An Alamagn, an Aotrich, an Itali na c'houlont ket a gendalc'h ; ha, da c'hortoz, doare an Durki a zo divalo tre. O welet ar poblou, a oa dindan he domani, oc'h en em zistaga diouti, stad an Durki a zo henvel ouz hini eur yar o sevel houi, a wel ane holl o vont d'ar ster, ha kaer he deus termal, sklotal hag ober nec'h, an houi a ziskoue d'ei beg o lost hag a lar d'ei dont war o lerc'h.

Herve hon c'hreden, ar Franz a c'hall bezan evurus o welet eun diskenour (descendant) eus he rouane oc'h azea war d'ron ar Vulgari ; n'he devoa bet roue digabestr abed aboue meur a gantved, ha mar digouefe an disteran trouz, he dever e vefe c'hoantât lakat ar peuc'h evit mad an holl.

Bulgariz, gant o roue neve, na glaskont ket a vrezel, mes p'o deus millierou a zoudarded prest da vrezelli, e laront e tifennfont o frankiz en despet d'an Durki.

Koumoul du a zav du-hont en bro ar Sao-Heol. Strakal a rey ar c'hurun ? Marteze...

Ra blijo gant Doue miret ac'hanomp diouz pep brezel !

AR YEODET.

LEVRIOU BREZONEK MAR PLIJ

'Vit ar skrivagnerien vretien, tu da gas o skridoù ermeaz kwit a frez ; —
'vit ar Vretoned, tu da gaout levriou neve bep bla 'vit man.

Ober d'an dud diwar ar meaz kât levriou brezonek bep bla, levriou-neve, 'vit man ; — ober d'ar skrivagnerien vretien difoaran, *gwerzan* o levriou, en nebeut amzer, hep poan ha hep koust ; setu eno daou dra ha na zebtantont ket mont a-genver. Ma 'n eye an dud levriou 'vit man, ar skrivagnerien n'o devo ket a arc'hant ; ha ma werz ar skrivagnerien o levriou, an dud a renko paeen pe tremen hep ket. Forz pegen start e seblant an divunetezen-ze, kavet eo. Kavet eo ganimp an tu d'ober d'ar skrivagnerien *gwerzan* o levriou 'vit arc'hant, ha d'an dud o frenan 'vit man. Penôs ? Dre *Vreuries ar Brezoneg*.

Breuries ar Brezoneg a ro levriou brezonek en priz d'ar vugale 'vit man, hag a bren ane digant ar skrivagnerien ; evelse, n'e ket gwir ? an treora 'n em gav par eus an daou du, eus tu ar skrivagner, koll ebet, eus tu ar lenner, gounid.

Ar bla-man, *Breuries ar Brezoneg* he deus roet evelse endro da daou c'hant priz d'ar vugale ; 'benn ar bla, mar be bolante Doue, e roo diou pe der gwech muioch. Mes eun dra zo es da gompren : n'hall ket rei ar memes prijou bep bla er memes paruou.

Neuze 'ta, 'zo ezom levriou neve bep bla, kentoc'h, avat, levriou a briz izel, adalek pemp gwenneget betek 10 real. Eun dra-all 'zo c'hoaz : red e vo d'al levriou bean skrivet holl memes tra ; (me gomz amau, dreist-holl, eus levriou Tregere), rak ne dalv ket ar boan rei levriou d'ar vugale, ma ve chanchamant doare-skrivan enne eus an eil bla d'egile, pe eus eur skrivagner d'eun all.

D'ar skrivagnerien da skrivan, muian ma hallfont, herve an *Emgleo gret* en Sant-Briek ha moullet gant an otro Clerc en e « Grammaire du Breton de Tréguier » ha gant Dir-Na-Doz e penn *Pipi Gonto* neve.

Ma n'e ket reiz a-walc'h ar skrivagner war an *Emgleo-ze*, kas neuze e labouriou da reizan da *Groaz ar Vretoned*. Eun dra red eo, mar zo c'hoant e vefe hag e kreske ar brezoneg, ober unvaniez war an doare skrivan. *Breuries ar Brezoneg*, eman he diaze war an unvaniez-se ; n'hall ober seurt ebe hep-i. Neuze 'ta, e haller kredi, ne lako etre daouarn ar vugale nemet levriou skrivet herve an *Emgleo* ; ar re a vije skrivet a-zivavez an *Emgleo-ze*, *Breuries ar Brezoneg* a lezfe ane a-goste, rak, c'hoaz eur wech, unvaniez

a zo red, mar 'zo c'hoant da zvel uhel ha da vont pell.

Marteze darn a lavarfe n'hall ket *Breuries ar Brezoneg* hadan kement-se a levriou 'vit ma talvefe ar boan heuilh an doare-skrivan harpet ganti. D'ar re-ze 'zo da respont penôs, daoust n'he deus c'hoaz nemet daou vla, *Breuries ar Brezoneg* he deus kaset dija ermeaz meur a gant levr ; ar bla a den eman en sonj da gaout toull da galz muioch. Benn ar bla, ar goueliou 'vo nive-rusoc'h, hag, ouспен, e voint kaerret, urzet ha gwellaet. Eloc'h daouzek pe drizek gouel, hon devo triwech pe ugent ; e tu-hont d'eur brezege ha soniou, bean vo peziou-c'hoari ha divizou. Ar vugale a gresk bemde er *Vreuries* ; evelse al levriou a renko kreski da vont ermeaz, p'eo gwir pep bugel an eve e briz.

Red e oa lavaret kement-man 'vit rei sklerijen ha kalon d'ar re a zo a-du ganimp, lennerien koulz ha skrivagnerien. Labour a zo, labour hirr ha start, mes mar karomp, ar Brezoneg n'e ket maro c'hoaz !

MIZ HERE

E miz Hero,
Teilet mat hag ho pezo.

Here, Du ha Kerzu,
A hanver ar miziu Du.

Ped hano kaer o deus roet,
Da lost ar bloaz ar Vretoned ?
Dibenn-east, Dihan-east,
Raz-arc'h, Miziu-du, Rag-east,
Diskar-amzer, ha Dilost-hanv,
Skub-deliou hag Hanv-c'hoanv.

LAVARIOU KOZ

Grilh a gân war an oaled,
E pep ti a zo karet.

N'eo ket red kaout skeul d'ar c'haz,
'Vit tapout logoden ha raz.

Nep ra gwab ouz ar re goz,
Ne day ket d'ar Baradoz.

Nep diwar e hent na zistro,
A dra zur pell pell a yelo.

Gant den falloc'h boutou, piou gredfe,
N'eus ket, eget gant gwreg ar c'here :
Pa vezer leue, n'eo nemet 'vit bloaz,
Pa vezer loen eo evit pell, siouaz !

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paeen eiz gwenneget dre vil nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Skrivan da E. AR MOAL (Dir na Dor), a labour en tu breton an eskopti evit ar *Savoyarde*.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement assurans a zo, assurans tan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou en arondisamant Gwengamp. Skrivan da E. Ar Moal. Gounid mat a vo.

Da gaout gwin mat ha rik, skrivet
22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux*.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broliou estren hag evit ar Broio keltiek.

RENERDOEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

**EMBANNOU-KONVERZ HA
KOUMANACHOU**

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer anezho

Ar brezonek hag ar feiz,
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FENEKZ AN GNEZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a VREIZ.
FURNEZ AN GNEZ.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Yez, e ve Pec'hed d'
MILIN.

Roll Rakprenerien " Bleuniou Yaouankiz "
Dastumaden soniou ha gwerzio
gant AR YEODET

Yan ar Penker, Logivi-Plougras. 1 levr.
Auguste Goaziou, Logivi-Plougras 1

BREURIEZ AR BREZONEG

Gouel Prat

Disul, 25 ar miz, goude ar gousperon, eil gouel
Breuriez ar Brezoneg en Prat.

Prezegen a vo gant Ar Yeodet; kanaouennou
fentus 'vel *Evel ar Pihauer*, gant Pen-dero,
hag-all; — prijoù d'ar vugale evit o labour epad
ar bla; — c'hoari-sac'h, eus ar braon, da glozan
ar gouel.

An holl a zo pedet da zont, kwit a gompliman-
chou!

Gouelioù Brizeuk

Ar zua a deu e kontfomp aman doare gouelioù
ar barz breton Brizeuk en Pont-Kerlô.

POENT EO!

Diwar eur c'houlz a vo e tihano an dud, evel-
kent. Kaer o deus bezan aheurtet, kaer o deus
serri o daoulagad, e renkont, koulskoude, anzav
ec'h a ar Gouarnamant eun tam pellik.

Na kredeunou tad ha mam, nag an doujanz
dleet d'ar frankiz, nag aliou kuzuilherien-parrouz
netra na harz ouz hon gouarnourien.

Kaer hon doa diarbenn an droug, diskuilh ar
fall, laret e vije gaoet an dra-man pe an dra-ze,
den abed na re an disteran seblant; er c'hontrol,
gwapeet e vijemp.

Eur maer a dese war c'hoar'hemenn eul lakez-
ru da drabuilhath beleien e barrouz: — Findam-
preg, eme an dud, ar veleien a zo re d'ober ennê...
Eur C'hergezek a rede an eil parouz hag eban
en eur dislonka diwar o galon vrein sotonion,
hudurnez ha moc'haj: — Henez, avad, 'zo eun
eubeul... Ar seurt-se a lak ar veleien en o roll,
han!...

Ha, dallet gant eur maer genaouek, touellet
gant eur *Pen-mil-skoad* diskiant, hon c'henvroiz
a wel, en eur c'hoarzin, dispenn dirak o daou-
lagad an urz hag ar furnez: o zruachou a gresk
bep bla, o frankizioù a dec'h, al lamponed a zo
war o goug: « Bale, emê, mont mad ra ar bed! »

Keit zoken eo et dizeblanter an dud, ma ne
gavout ken en o c'halon eur gomz evit difenn ine
o bugale.

Eur vro elec'h ma kaver tadou ha mammou da
lezel muntri ine o bugale hep en em glem, a zo
eur vro gollet!

Laret d'in, tudou ha mammou, ha c'honi a c'hail
chom yen ha dizeblant dirak glanded ine ho pugal!
Daoust hag ar bugel-ze, ho kwad, daoust hag
e galon ken birvidik a gened a hallfe bezan labeet
dirak ho sellou hep na lezkef'h eur glemmaden!
Ne gredan biken!

Ha, koulskoude, setu ar pez a c'hoarve bemde.
Bemde e serrer ouzoc'h skolioù kristen a gantchoù;
bemde, heuveul ouz eur vanden derved, e ve kaset
ho pugaligou d'ar blei, hag enpad blavezioù n'ho
peus ket groet an disteran van...

Dirak ho yenien, hon galvadennou a chome
dinerz, dirak ho gwaperez e fall-galonemp alies.

A drugare Doue, pep tra n'eo ket kollet; ar
muzul a zeblant bizan bar. Diwean serridigez ar
skolioù kristen he deus peurgounaret eur barouz.
« Petra! bezan hon deus eur skol leun-chouk a
vugale; ne goust gwenneg ebed d'imp... welloc'h
skol a zo enni eget er re-all, ha hep chilaou hon
mouez ar Gouarnamant a zerr anei! Daoust ha
n'eus ket traachou a-walc'h war ar vro c'hoaz!... »

Setu aze komzou Pedernegez hag o c'huzuilhe-
rien-parouz, dirak oberou Kergezek hag o maer
koant.

Daouzek eus ar guzuilherien-man 'zo o paouez
teurel o dilez gant fas ar Prefed. N'eo ket re abred
e roont, goude bezan meur a wech savet o mouez,
eur skouer hag eur gentel vad d'o c'henvroiz.

Kaer e zo bezan a du gant Kergezek hag ar
batred-ru, eur muzul a zo da bep tra... Arabad da
vlokarded Pedernek dont da zifenn o c'haoz; o
c'haoz a zo toull, ha kement deu an eus skiant
vad ha spered eon, a zavo e vouez enep d'an dud
treitour.

Peseurt poan a re ar Sautrezed en Pedernek?
Perak serri o skol? Pelec'h ec'h ey breman an
200 bugel a oa gantê?

Diwar goust pion e vo savet eur skol-neve?
Pion a baer o skolerezed-all?

Ha c'hoaz, tadou ha mammou, goude sevel
skolioù-all — a gousto ker d'ho kodellou, rak
c'honi eo a baer! — n'ho po ken al liberte da
zevel ho pugale herve ho c'hoant hag ho kreden-
nou.

Gwelet a ret breman labour gaer ar vlokarded
vrao... Breman, da vihanan, e wilet ar wirione.
Ne dalve ken laret e vo serret ar skolioù; gaoet
eo an tol; digoret ho taoulagad hag e welfet!

Enor eta da guzuilherien Pedernek!

Pegwir o c'huzuilhou na gontout netra; pegwir
Kergezek hag ar Prefed a anve gwelloc'h evite
doare hag ezommu ar barouz, ar gwellañ tra
d'ober eo lezel gant pep-hini pouez e labour fall
ha mez e oberou divalo.

Tam ha tam, evelkent, e tigorô an dud o daou-
lagad... N'hon deus ket achu c'hoaz!

Mar karje ar bobl bezan laket eun dek vla 'zo,
kement a galon vad da zifenn e skolioù, evel m'o
deus laket an dud fall a gounar, a gasoni d'o
serri, pell 'zo hon dije bet peuc'h ha pell 'zo e vije
an dud vad o ren war hon Bro.

Dirak kement a fallagriez, ra zavo pep tad, pep
mam, da zifenn da vihanan ine o bugale.

Na fell mui chom da varc'hata... Tremenn poent
eo!

AR YEODET.

AN TI NEVE

Muniget d'an dimezel Anne-Marie Guillonet.

War gement ti neve-savet,
Gwechall e kane ar varzed
Eur zon bennak evit goulen
Bennozio Doue d'ar pere'hen.

Kinitervez, eun torfed 've
Binnigan d'it da di neve,
Hag ober fae er memes tro.
War gizio enorus hon bro!

Dao d'ei eta, ma zelennik,
Diskoue nan out ket raiouet-mik,
Hag e c'hellez c'hoaz, pe ve lec'h,
Sevel da damm mouez ha rei bec'h...

Dirazan eur c'houlouenn goar,
Ar beleg a strink d'an douar;
Goude ez a gant e boden,
E traou, e krec'h hag e peb penn.

Dre vuzud an dour binniget,
Chetu skampet an droug-speret;
Skarzet diwar ar raz, ar vein,
Leo-touet ha komzo brein.

En ti gallout 'ra da el-mad
A denn-askel donet timad,
Rak aman an Otro Doue
'Zo breman ha mestr ha Roue!

Groet da gimiad-dilezel
D'ar lec'h a vugas da gavel,
Hast dont da danva war o hed
Ar peuc'h hag an evurusted,
Nan helles monet beteken,
En ti-all eus eun nor d'eben,
Ober eur c'hammed tu pe du,
Heb cheuch maer ha parouz dioustu.

Bean da haute-kant vla kloz,
Epad an de dre diou baroz;
Kaout daoubennet da vue,
Ha 'oa ket houneuz eun druez?

Gwechall, dindanout, 'harz ar porz,
Bepred tourni, bepred kri-forz;
Loened, eleiz, o c'houirinal,
O soroc'hat hag o vlejial.

Breman, tro-zro, en till uhel,
Evidout brasat diduel,
Klevet evned, war gement ton,
O kanaan d'it o bravan son?

Hiboud ar feunteun hag ar waz,
O redek a-dreuz d'ar yeot glaz,
Hag o kaketal 'n eun dremen,
D'ar giesker ha d'ar valafen.

'Boue ar mintin betek an noz,
Trouz ar gwenna e-mask ar roz;
Rouzon ar c'haez oc'h hunvreal
D'ar logod a bake gwechall.

Lec'h c'houez an haoue hag an teil,
Bleunio da liorz, a heb-eil,
A gaso d'it, na pebez stad,
'Vel eur haradoz a c'houez vad.

Chetu te tostaet eun tamm,
Da gat iliz Gwerchez Gwengamm;
Kan ar beden ha mouez ar c'hloc'h,
War benn-hent d'it a deuy fresoc'h.

Eus ar beure pe e savi,
Dirazout, raktal, e kavi
He zourion uhel o lintran,
Dindan an heol o tispakan.

Kleier, kleunio, gwazig, evned,
Peuc'h, karante ha joasted,
Chetu a-walc'h d'it da vean,
Evurus keit 'teus da vevan...

MA BEAJ LOURD

Peurit-ar-Ro'h, an 18 a viz here 1908.

Ma c'hamaradez ker,

Pell a zo em oa c'hoant da skrivan d'it, rak kalz a dreo am eus da gontan en dro-man. Abalamour da ze, e c'hortoen m'am ijo eun tammig amzer. Herie eman ar yaou, eun eur pe diou na vo ket re d'in da gozeal ganit.

Na divines ket pelec'h on bet epad ar c'honje tremenet?

Goud a rez pa oan bet gwall-glanv, sonjal a re an oll e vijen marvet. Mes ma maeronez a gar ac'hanon kement, ma westlas d'ar Werc'hez, mar tenjen yac'h c'hoaz, kas ac'hanon da Lourd, da drugarekaat ar Vam zantel-ze, pa 'mije gret ma Fask kentan.

Ac'hanta, ma mignonez ker, bet am eus an eurvad, evit ar bla, da ober ma C'homunion genta, da vont d'ar lec'h biniget-se, elec'h ma ra ar Werc'hez kement a varzudo.

Ar 14 a viz gwengolo e oamp partiet eus Sant-Briek, ma maeronez ha me, hag eun dimezel eus ar barouz, kamaradez d'am zud. Re hir e ve d'in kontan d'it an holl dreo am eus gwelet pen-da-ben an hent. Keit ha ma oa skler an de, ne baouezen da zellet dre ar prenestri; gwelet a ren gario bihan ha gario bras, kerio bihan ha kerio bras : Raon, Naonet, Bourdel, Pau, hag all. En-pad taer eur amzer, ne welen nemet gwe pin, poudo bihan 'vel pinsino staget oute, da digemer ar rousin. Ar Lanneier a ve gret eus ar vro-ze (département des Landes, e galleg).

Eun dra 'fat a renkan da laret d'it, rak spontet e oan bet neuze. Sonj e oa kroget an tan, epad an noz, 'barz ar rojo a oa dindan ar wagon e oamp enni ! An oll a oa lampet, ha ni da genta, ermez eus ar gweturio, o klevet krial : An tan ! an tan !

Mes n'eus droug ebet na zervij d'eur vad ben-nak gant bolante Doue. E lec'h eur goz wagon e oe laket d'imp unan neve bete fin hon beaj !

Arruet omp en Lourd eun tam warlerc'h, abalamour d'an dale-ze ha daou pe dri-all, mes an-koat eo bet se gant al levenez o welet ar lec'h santel en em diskoneas ennan Rouanez an Env d'ar plac'hig vihan Bernadett.

Goude bean kavet hon lojeis, debret eun tammig, ec'h ejomp dustu da welet ar c'hao binniget. Pebez joa ! ha pegen kaer eo bean eno, o pidi dirak tolen an Itron Varia ! Ne skwizer ket eno. Allas ! red eo d'imp tec'hel koulskoude. Dont a reas tro 6 eur, eun arne hag eun tol dour spontus. Beteg ibilho e dreid ac'h e an nen 'barz en dour er ruio. Pep-hini a rede eus e du. Arru er ru vras, e oa kement a dud hag a weturio, ma koueas ma maeronez diwar an « trotoar » er ruzelen, ha me, dispartiet diouti, a gollas anei. Pebez glac'har, ma Doue ! Dont a ren 'n eur ouelan, dindan ar glo, hep gallout kat ma zintin baour, 'vel just ! Tud vat a gemeras true ouzin, ha, pa 'moes laret pelec'h e oamp o lojan, eun den yaouank madelezus a deuas d'am c'has di. Pebez euvrustek, pa gavis eno ma maeronez ger ! Neuze e ouelis adarre, gant joa.

An de warlerc'h, ec'h ejomp d'an ofern da Iliz ar Rosera, elec'h e oa dastumet pelerined Sant-Briek endro da 'n Otro 'n Eskop meurbet karet.

Goude kreiste, oa prosesion ar Sakramant. Kaerat tra da welet ! Nan on ket disket a-walc'h evit kontan d'it eun dra ken burzudus. Eno, en dro d'eur blasen vras, e oe renket an dud kez klanv pe namet ; ouспен 500 a oa ane, o c'houll dre bedenno ar Werc'hez, ar yec'hed digant hon Zalver Jezuz. Klevet a teus komz eus ar miraklo 'zo bet. Me n'am eus sonj nemet eus eur plac'hig bihan bouzar ha mat a-viskoaz, hag a gleo hag a gomz breman.

Tro eiz eur eus an noz, neuze e oe arprosession am oe gwelet, kaeran an holl o doa beb a biled « pe golo-koar » war elum. Ha kanan a re an dud, en latin, en galleg, en brezoneg, en pep sort langaj ! Ma vije renket ar bobl-ze war peder rigen

o dije bet eun hanter-leo a hed, da nebeuta.

Ar yaou ec'h ejomp adarre d'an ofern en iliz-veur pe bazilik, ha goude, da bidi dirak tolen santel ar c'hao. Me 'm eus pedet eno ive eus ma gwella, evit ma mammig kez a zo maro, evit ma zad, ma breudeur ha ma c'hoarezed vihan. N'am eus ket ankoat ma maeronez vat, a zo bet eur vam dener evidon bete vremen ; evit ma zonton, a zo eun eil tad evidon ; goullet am eus graso evit tout ma zud.

Goude mern, ec'h ejomp da welet ar sinemato-graf. Eno am oa gwelet treo fentus, fentus, mes treo kaer ive : buez Bernadett, adalek ma oa bihan, betek he maro evuruz.

Red eo bet koulskoude dont d'ar ger, rak buan e tremen an amzer en Lourd. Keun ve o kwitat ; mes red eo distrei d'hon bro garet Breiz-Izel, elec'h e keromp tout ar Werc'hez, ha n'ankoafomp ket Itron Varia Masabiel.

Me am eus prometet bean devot d'ei evit ma c'hallin mont da welet anei er baradoz, elec'h ma'ch eo kaeroc'h c'hoaz, ha marteze da Lourd eun eil gwech, ma ve belante Doue.

An dro-ze, ma mignonez, e teui ive ganin, me esper.

Da c'hortoz, gant karante e pokan d'it start.

Da gamaradez Anna PERROT.

(En skol gristan Ti-glas en Peurit-Ro'h).

Melkoni Breiz

Spered eur gwir Vreizad 'zo dies d'anveout D'an hini n'an eus ket saulet en e vruched, Er krenv ar meneioù, birvidik he galloud, O redek gant e wad, en eur skuilh ar yec'hed. D'an neb 'n eus ket bevet 'dalsk e yaouankiz, 'Dan an oabl koummoulet a c'holo Bro Vreiziz.

Koulz er saonennou koant a ve kavet a leiz, Ken leun a vuez vat, en pep kor eus e vro ; Koulz el lanneier bras a ra mantel e Vreiz, Koulz war e veneioù hag e roziou garo, Lagad glas ar Breizad, 'n e zellou dudiuz, Bepred a ve melkonius.

Ouz hen gwelet ken rust an estren a lavar : « An den-man, en e greiz, 'zo gwasket gant ar [boan ; « Rouden skalfiou e dal a guz meur a c'hla'har ; « 'N e zellou ankeniet e welan liou an doan ». Hag an estren fero, 'vit koll ar gwel poanuz Eus eun den ankeniet, a dec'h hag hen faeuz.

Nan, nan, n'eo ket ar reuz nag ar poanuiou kalet An eus roufennet don tal ledan hon kouerien ; N'eo ket an ankeniour, reuz kri an dud gwasket, A ro d'eo an drem-ze, ken rust 'vit an estren. Nan, ar Breizad n'eo ket eur paour kez krouadur, Kollet 'n eur vro gone ha hudur.

Selaouet-han ervad, p'hen gwelfet 'barz ar roz, O touzan e dam bruk dindan an amzer fall, Hag e klevet e gan, mes biken e valloz, Evel monez ar c'hleier en avel o tintal. Selaouet-han, en noz, pa dreuz e lannioù, Ha bepred ne glevfet 'met diston e zoniou.

Petra 'ta 'zo kiriek d'eul levenez ken bras, En kalon an den-ze a zebant ken doanuz ? ... Sioulder melkoni a zo 'n e lagad glas ; Ha pa digor e yeuz 'n eur vouse'hourz dudiuz, E weler 'zo 'n e greiz peuc'h ha glanded teney : Melkoni Breiz 'zo eun douser.

Eun Troc'her Iann.

YANNIG-AN-UO

Pa oan en oad a daouzek vla, 'vije gret ac'hanon Yannig-an-Uo. N'e ket dre oan gwasoc'h 'vit eun all war an uo. Peurvuian, ne danvaen ar vlaz ane nemet da zul Fask, ha n'e ket me duman oa ar zotan gante ; mes adalek an oad a dek vla, dre ma oan ar c'hosan en ti, 'vijen kaset bep sadorn da varc'had Gwengamp gant eur banerad uo, ha setu dre benoas oan deut da vean 'vit an holl Yannig-an-Uo.

N'e ket ankoat ganin c'hoaz ma zro gentan,

ha ma ra plijadur klevet anei, d'ar re vihan ha d'ar re vras a lenn *Kroaz ar Vretoned*, me ya da gontan anei d'ac'h. Na 'm oa ket dek vla, — gaou a laran, — pan is, 'vit ar wech kentan, ma unan da varc'had an uo ; sonj am eus ne oan ket krog c'hoaz, er mare-ze, da vont d'ar c'halekiz. Eur zadorn ar beure, eta, mam a laran d'in :

— Arsa, ma'ch bihan, red vo d'ac'h mont hirie en ker. Me n'on ket yac'h, hag am o trawalc'h eus ma labour er ger. 'Ch an da lakat an uo d'ac'h 'barz ar baner, ha tri lur aman am eus ribotet ar zun-man, hag ec'h efet da werzan ane. Me a deuas ru hag a zautas ma c'halon o krennan.

— Me, mam, 'meon, mont da werzan an uo ma-unan, hag-en n'on bet biskoaz ? Ha mar bent laeret diganin ?

— 'Ve ket laeret an dud evelse, 'me mam. Ha neuze, red eo d'ac'h kustumi ; bet oc'h ganin diou pe der gwech hag ho peus gwelet an doare.

Goulen a refet daou wenneg warnugent 'vit an dousen uo ha pevar real 'vit al lur aman.

Setu oe digaset d'in gant mam ma chupen neve ha ma botou ler, lakat an uo hag an aman d'in 'n eur baner, troc'het d'in eun tam bara zec'h, ha kaset en henchoù.

'N eur vont ermeaz an ti, mam a c'houllas ganin 'vit an daouzekved gwech :

— Laret d'in c'hoaz 'ped tousen uo ho peus, ha pegement e werzfet an dousen ?

— Peder dousen, emeon, ha daou wenneg warnugent an dousen.

— Ha ped lur aman ?

— Tri lur aman, pevar real al lur.

— Mat ! eme mam. Diwallet ne ankoufec'h !

Diwallet ne chomfec'h ive da c'hoari pe da c'houren ho fri war an henchoù ! Deut d'ar ger dal m'ho po gwerzet ho treo, rak me 'm o ezom arc'hant e-berr. Bean 'm o da vont d'ar bourk da brenan treo hag a gousto d'in kalz arc'hant. Laret d'in c'hoaz ive pegement arc'hant 'po da gavet 'vit ho konverz ?

— Eur skoed 'vit ma aman ha triwec'h real 'met daou wenneg 'vit ma uo ; ar pez a ra seiz lur hag eiz gweeneg.

Desket mat am oa ma c'hentel.

Pa oan o vont ermeaz, ma faner ouz ma brech'h, mam a nuchas warnon c'hoaz :

— Tolet ple ho pefe ho kont, c'houi oar ? gret ho sin ar groaz rok mont en hent ?

Me oc'h ober sin ar groaz, o skei ma dent 'n em bara, ha war rok.

Mam a chomas war an trenjou, da zellet ouzin, 'chan he devoe kollet ar gwel warnon.

'Benn e oen arru en ker, me oa skwiz. Mes ar pep gwasan a chome d'ober. Oa ket a-walc'h kas an treo en ker, red oa o gwerzan. 'N eur dremen er porched, ec'h antreis da laret ma fater, ha goude 'ch is war draon 'tresek plas an aman. Ne oa ket c'hoaz kalz a dud. Digeri ris ma faner 'vel ar re-all ; et a-walc'h 'vijen bet 'n em c'hoaze e kichen, mes ne greden ket, o vean ma oa an holl 'n o zav. Da c'hortoz eur marc'hadour d'arruout, e hadtremenen 'n em spered priz ma zreo.

— Seiz lur eiz gweeneg, 'mon-me, 'm eus da gat. Ha pegement e lean goulen 'vit al lur aman ?

Pa oan o klask-ze, setu eur plac'hig daouzek pe drizek vla, gwisket giz ker, o tostât ouz ma faner :

— Uo 'zo ganac'h ? emei, en eur ober eur zell.

— Ya, 'meon.

— Uo fresk ?

— Ya, 'vat, 'meon ; mam 'deus laket ane d'in er baner.

Ar plac'hig he devoa eun er trist ; koulskoude e reas eur minc'hoarz.

— Me a renk kat uo fresk, emei, abalamour d'am zad a zo klanv gant an drouk-skevent. Mam n'he deus ket gallet dont hirie d'ar marc'had, hag am eus aon da brenan uo ha na veint ket mat.

— Ha mam, emeon, a zo dies ive, ha dre-ze 'm eus renket me dont en ker. Mes ma uo a zo mat, 'vit kelo ze !

— Pegement an dousen ? emei.

— Pevar real ! emeon. Ne oan ket gwall sur eus ar priz.

— Ped tousen ho peus ?

— Peder dousen.

— Kement-se 'n eus ezom ma zad, mes n'am eus ket c'houezek real da rei d'ac'h.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Brezel an Durki. — Bet eo ar brezel war ar poent da strakal etre ar Vulgari hag an Durki. « Sultan » an Turked an devoa kaset urz da dastum ar zoudarded hag an armon.

Mes goude bean tenn, an treo a zo sioulaet, ha hirie e komzer a heuc'h.

Kambr an deputeed. — Herve klevet ar c'hazetennou, an deputeed a dleje bean eun toullad deiou 'zo, en Pariz, o labourat, herve o micher, da c'houit o femp mil skood ar bla. Mes re vrao eo an amzer da vragal ha da chasaal.

Daoust d'ar Gambir da vean digor, an deputeed a ra skolij louarn.

Gout ouzoc'h 'zo kalz da lavaret war gont ministr al listii-mor p'eo gwir 'zo bet kollet, en listri, aboue eo ministr, 75 milion ha lazet dek ha nao-ugent a dud hep brezel. Ac'hanta, disadorn an de merket da gaozeal diwarben an treo a vor ha da ganen e jakeden d'ar ministr Thomson, g'out ouzoc'h ped depute a oa er Gambir? *C'houezeh*, war c'houezeh kant! Dre forz gervel ha klask en pevar c'horn Pariz oe gallet dastum dek ha triugent!

An de ma oe votet ar peizsek mil lur ne vanke hini ebet ane.

Ar ministr Thomson, gwaler ar varfoloded a zo bet diskaret dilun.

Brezel etre Frans hag ar Prus. — Kazetennou a lare dimeurz e vije brezel dindan pemzek de aman, etre ar Frans hag ar Prus, ma ne dennje ket ar Frans he zoudarded eus ar Maroc.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

CAOUENNEC. — Tapet gant e fuzul. — François Tondic, eus Caouennec, an eus 'n em dizet gant e fuzul, koveet gantan ha li karget. An tenn a yeas ermeaz hag a vreas e zorn. Reuket 'zo bet troc'han d'ean e vrac'h.

GWENGAMP. — An avalou. — Mont a ra an avalou war gree'h. Disul e tapent 20 real.

Klemm war ar zoudarded. — Herve, an em gav, en kazern Gwengamp, eun nebeut soudarded hag a lak an trez en ker. Trouz, tabut, kannou a ve gante da noz war ar ruiou. Neve 'so, o devoa stlapet mein en ti an otro Briand, o chom war ar blasen. Eur wech-all, o devoa laeret ha pilet eun emmenuzer eus ker.

Klemm a zav war o leic'h a hep tu.

LOGIVI-POUGRAS. — Mision. — Eur mision bras hag en deus padet eiz de, a zo bet roet gant otro person Plougras d'he barousianiz ar zan dremenet.

An otroe L'Hévédér ha Person, gwechall tadou jezuisted, o deus prezeged ar mision, o sikour ane an holl veleien ginidik eus ar barouz hag ar c'hurreed koz.

Eur vad dispar an evo gret ar mision-man, etouez bugale sant Ivi. Daou vil a dud o paskan an de ma kloze, an iliz leun-chouk, kement-se a ziskoue e oa bet mat tro Doue en don an ineou.

Goude an oferennoe oe gret eur profesion bras en enor da zant Ivi, patrou ar barouz ha kanet a greiz kalon gant eur bobl a dud kantik kaer sant Ivi gret gant an otro Goasdoué, kure en Gwengamp.

Diwallet parouz Logivi,
Ouz a hep droug he miret,
Hag eun de, en Nê, sant Ivi,
Gret d'imp bean unanet.

Evelse e kane parousianiz Logivi. Da c'hortoz bean unanet en ne, ra chomont unanet war an douar, evel emañt breman, holl bodet dindan dorn Doue. Hennez e vo kaeran testeni a anaoudegez vat a hallfent da rei d'o fastor, d'o beleien ha d'an tadou a zo bet oc'h ober eun tam ambroug d'e war hent ar baradoz.

Tan-gwall. — En ti Goffic, labourer, an tan-gwall en deus devret eur c'hraou ha bevniou a bep seurt; 1.500 lur koll evitan, mes asuret e oa.

Chom a reas eur pennad, da zonjal, ha hi trit. — N'hallfec'h ket, emei, lakat ane pevarzek gwenneg an dousen? Bean 'm efe arc'hant a-walc'h neuze da brenan ar peder dousen.

Mam he devoa laret d'in rei ma uo d'ar memes hini, mar galljen. Fe, ha me oc'h ober 'vel mib ar wrac'h.

— P'eo gwir eo c'houi e l' meou, kaset e gac'h!

Dremm ar plac'hig a skleraas.

— Rei a rafec'h ane? emei.

— Ya 'fad! 'moun-me.

— Bennoz Doue d'ac'h!

Ha hi o kontan d'in unnek real hag eur gweneg. Ouspenn, e roas d'in eur c'hoarzaden war ar marc'had.

Setu me difoaret ma uo. Eun tam e oan nec'h, rak re varc'hadmat e sonjen 'm oa roet ane; ha koulskoude, p'eo gwir e kemere ar peden dousen, ha p'eo gwir e oa klanv he zad!...

Pa oan gant ma zonz, pleget war ma faner, ha me o klevet eur vouez:

— Pôtrig, pegement al lur aman?

Eun tol a skoas 'n em spered: « Red eo d'in, da vihanan, emeon, gwerzan ma aman ker!

— Tregont gwenneg! emeon.

Eur vourc'hizez a oa diragan gant he mab bihan ouz he dorn. Ha hi da c'hoarzin.

— Te werz, da vihanan, gwelloc'h aman 'vit ar re-all, pan out ken ker-ze?

— Tanvaet anean, emeon.

Ar pôtr bihan eo a lakas e viz en aman.

— O! mam, heman 'ze mat!

— Kaer 'zo laret, ar re-all na werzont nemet pevar real al lur.

— Ya, 'meon, mes heman 'zo aman gret gant mam.

— Da vam a ra gwelloc'h aman 'vit ar re-all?

— Ya, ha koulskoude eo klanv!

— Klanv eo da vam?

Ze 'zo kaoz 'm eus renket dont en ker!

Ar pôtr bihan a zelle piz ouzin.

— O mam, emean, pren e aman digantan!

— C'houec'h real, emei? 'n'on ket zod a-walc'h!

— O mam, emeon, p'eo gwir eo klanv e vam.

— Te rafe eur marc'hadour, ma fôtr!

— Mam, hennez am eus c'hoant!

Ma fe, 'vit kontan d'ac'h berr, prenan reas an itron ma aman, c'houec'h real al lur, abalamour tennan peuc'h diouz he mab. Neuze oa laouen ar pôtr, mez me oa muioc'h c'hoaz. Pa zellis ma c'hont, e tapen seiz lur ha c'houec'h gwenneg: daou wenneg koll am oa.

Pan arruis er ger, e oe laret d'in e renkjen di-zrei ar zadorn warlerc'h. Meur a zadorn oun bet goude en Gwengamp, mes n'am eus ken gret marc'hajon seurt gant ma marc'had kentan.

A. M.

AR GER VILLIGET

GANT
LAOUK

(KENDALC'H)

II

Noz de, hep diskwiz, eman an t'ân enni; noz de ar moged a zav o terc'hel en dro d'ei eur vougen deo; en pep amzer e klevet enni evel trouz tarzjo kurun ha ruilhaded ar c'hirri houarn leun a dan war ar porz, sklejet gant divrec'h nerzus ar vicherourien. Noz de! En gwirione, sonjal a ret en poanio an dud daonet pa welet 'barz an devallien an oabl o tigeri 'us d'al lec'h-se ha pa sko an drouz-ze ho tioukouarn.

Aze nan eus diskrog ebet! Aze, pa c'h a an heol da guz, pa deu an noz sioul d'asten he mantel war pep tra, o laret d'an dud ec'h e poent d'e mont da hadneveat o nerz, an treo ac'h a bepred war-rok gwasoc'h-gwas! Aze ez eus tud a ra labour galeourien evit gonit eun arc'hant na dousao ket kosni an darnvuian ane. Aze e-leiz a vibien krenv d'an douar a deu a-greis o fljadur da devi, d'ampoezoni ar gwad rik o deus laket o zado en o gwazied.

Gwelet ar fornier gant e labour. Nan eus man warnean med eur goz roched digor frank war e vruched hag eur brago fall; en e dreid ez eus chaousenno gant eur zaolen kerden: bofeter ler a vefe devet hep dale; t'ân a zo dindanan ha t'ân a bep tu, ar c'houezen a ziver war e vizac'h, war e goif, a dastum ar boultren glaou douar a nij dre oll; hep dale n'halfet ken e anaveout; poan ez eus o kridi c'h e eun den a zo diragoc'h o vont hag o tont a-dreuz d'ar moged, o skarzan pe o kargan ar fornio ken gweun gant an domder ken n'halfac'h ket paran ho taoulagad warne pe vent digoret. Nan! nan oc'h ken war an douar; sonjal a ret kentoc'h bean diskennet 'n eun hunvre 'barz al lec'hio spontus-ze a gomz ane an Dant.

Ha souezus e teufe ken lies a hini, en eur labour ken poanous gant an domder, da c'houlouen gant an evach krenv pa zantont o c'halon o fallaat, an nerz o deus ezom evit peurachui o labour! da diwalc'h o diabarz gant bep sort lonkaj o klask terri ar zec'hed a bistig ane dalc'had! N'e ket, a dra zur!

Goude daouzek eurvez hirer tremenet evelse e tigue ar fornier er ger, e gorf brevet, e vizac'h droukliv hag e galon rukunet.

Ezom an neus d'ober eur pred mad evit hadre-veat e nerz med e galon na c'houl man; 'n em daol rey war e vele hag eur c'houset ponner, troc'het gant hunvre fall, a zerro e zaoulagad hag a bouezo war e izili.

Pa diskwizo en noz an treo ac'h ey mad a-walc'h c'hoaz, med en de pep tra en em glev evit distagan anean diouz e renoz: ar sklerijenn a furch kement korn a zo en e gamprig hag a disken he banno war e vizac'h; an amezeien a ya hag a deu er skailhero, a sko hag a huch 'us d'eo benn, ar bugelig a ouel en e gorn abalamour n'hall ket c'hoarzi hag ober trouz, betek mouez izel ar pried, skraf he chaousenno war ar gampr, trouz eur besel paozet goustadik war an daol, a skoo dioukouarn ar c'houster. Tremet a rey ter pe beder eur en e vele o trei hag o tizrei ha, pa zavo, e vo ken brevet hag arôk.

Ar vue-ze e oa hini Fanch; aezet eo gouzout pe na oa ken reizet, pa gouee a dam ta dam en eur sort dizurz aboue 'oa tec'het e bried, e kolche prim liou ar yec'hed.

Pa dizroas Anna e oe spontet o welet anean. Da gentan e sonjas e oa bet klanv; med kaout a re anean ive dishenvel diouz ar pez e oa arôk. Nec'het e oa kas gouzout petra 'oa kiriek da ze. E-pad pemzek de e renkas chom gant he nec'hantant rak hen n'anzave maun outi ha nan e ken kement da heuilh e vignoned.

Eun nozvez e tigueas er gêr diweatoc'h evit e gustumans ha dal ma tigoras an nor e welas ervad e oa meo.

— « Ma Doue, emei, pelec'h e oas manet? Ha petra 'zo arru ganit? »


— « Eur vodadeg a oa fenoze gant ar syndikat, emean, ha ze 'n eus daleet ac'hanon. »

— « Pennaos! breman c'houet eus ar syndikat? »

— « Ya, da zur, emean, petra a fall a zo eno? (Da heuilh). LAOUIK. »

TON CHOM EN BREIZ-IZEL

GANT AR YEODET



Plac'hig yaouank, perak ta tec'hel pell demeus

da vam ha da dad? Perak kuitat da vro Breiz I-zelec'h out

e-vurus ha mat An kouar c'heriou gant o fals madon Eno

Tec'h du-di e kavfes tru-buil-hou. O chom en bro da gavel, O

chom en Breiz-Izel.

chom en Breiz-Izel.

Gwechall, war gement Neventi,
Ermaez kenkouz 'vel 'barz an ti,
Eur barz bennak save soudan
Da dispakan eur ganaouen.

Breiz oa neuze eun delen aour,
A gane d'ar pinvig, d'ar paour,
Hag e talc'he, 'vel dre vuzud.
Ar garante etouez an dud.

An Neventi breman dremen,
Ha level a ra an deleu :
Ouz eur rusken didrouz he c'hreiz,
Diwall da dont henvel, o Breiz !

Gab LISKILDREY.

EUL LIZER

K... 13 a viz here 1908.

Otro Renner,

Lennet am oa aman gant plijadur, n'eus ket
pell, eur pennad sinet *Pen-breton* hag e oa kom-
zou eunan eus silvidigez ar vro, dre abostoled
hag o dije war an dro karante Doue ha karante
Breiz.

Ar mennoz eus ar skrid-se a zo eus ar gwellan
hag eus ar c'haeran ; mes bean eo, kredabl, re
denn da vean digemetel hirie gant ar Vretoned ;
eun haden evelse n'hall ket diwan kaer er ma-
reou-man, en douar Breiz.

Ha koulskoude, kent ma vo gret labour a droc'h
en Breiz, vo red an zav ha digemer ar reolen-ze :
Doue ha Breiz, n'e ket a c'heno hepken, mes a
greiz kalon.

Piou bennak an eus micher da labourat 'vit
Breiz ha na eun ket e vue en skouer gant al lezen
gristen, hennez a ya da goll hag a gas Breiz
gant an d'oll. Kement droug a ra d'ean e-unan
a ra ive d'e vro. Pec'hejou an den-ze, ar re guze-
tan zoken, a goue kouz war ar vro, 'vel warnan
e-unan.

Dre ze, nep na heuilh ket al lezen vat, reisan
ma hall, hennez na d'efe biken klask soursial ouz
mad ar vro, p'eo gwir n'e ket gouest da intent e
vad e-unan.

Kentan mad ar vro, 'vel kent an den, a
zo 'barz ar relijion, rak ar relijion a zo Urz, Bue
ha Gwirione.

Breman, en Breiz, pa zeller piz, e weler lies a
droug, mui evit a vad. N'ouzou ket penôs eman
kont er parouziou-all ; mes setu doare an hini
eus du-man.

Breman 'zo eun tri-ugent vla bennak, er barouz
eus du-man 'oa kalz a dier mat ; bean oa lies a
berc'hen o vevan pinvik war e dra ; ne larfen ket
gaou o lavaret e oa pemzek pe c'houezek tiegez
hag o devoa etre mil ha daou vil lur leve. Hirie
an de, sellet endro d'ac'h. Pevar pe bemp a chom
c'hoaz 'n o zav, ya, gant poan ; ar re-all a zo bet
skubet 'vel gant eur barr-arne.

Ar vereri ac'han, ar vereri eus du-hont, da biou
int breman ?

Gwechall e oant da dud eus ar vro, Bretoned
koz a vad hag a galon ; hirie int gwerzet d'eur
marc'hadour bennak eus ker, pe d'eur boutc'hiz,
pe d'eur mestr-skol ha n'o deus man a vretou,
nag ar stumm, nag an hano, nag ar yez. An tie-
geziou koz a zo skubet, hag o bugale a zo mere-
rien pe micherourien er broiou-krec'h.

Sellet breman gant piou eman an dorn 'barz ar
barouz, piou a zo mër, piou a zo konsailher ?
Du-man, en eur barouz labourerien, eo eur medi-
sin a zo mër ; eur medisin ha na oar gir bre-
zoneg ebet.

N'e ket ar boan komz eus ar skoliou. Eno, ar
Breton nag ar brezoneg n'o deus galloud ebet.

Hag en iliz ? Ar veleien, o c'houzout ar brezoneg,
hen komz hepred en iliz ; mes daoust ha n'ho c'h
eus ket klevet laret ne gaver ken nemeur a Vre-
toned da heuilh ar studi beleg ?

Evelse, Breiz-Izel a goac'h en pep doare :
Ya, bet 'zo kouz hag ar Breton a oa perc'hen
en e vro muioc'h 'vit nan eo breman ; bet 'zo
kouz hag e oa mestr en e barouz muioc'h 'vit
nan eo breman ; bet 'zo kouz hag e oa beleien
vretou muioc'h 'vit ne zo breman. Er skol, avat,
ar Breton n'eo bet chilaouet biskoaz.

'Chanta, eus a belec'h e teu an droug ? Lies a

dra a zo penn-kaoz d'ean ; mes me lak, da gentan,
an dra-man : ar pec'hejou.

Pec'hejou ar bobl a gastiz ar vro. Perak eo et
madou an tiegez-man etre daouarn eun estranjou ?
Abalamour 'zo bet renet eno bue fall, peurvuian.
Perak eman an dorn er barouz gant an estran-
jourien ? Lennet an *Testament koz* ha laret d'in
perak e teue an estren da vestr war pobl Israel ?
Perak n'eus ken kement a veleien vretou 'vel
gwechall ? Pe Doue pe ni a zo kaoz ? Koulskoude,
ar beleg breton a zo o terc'hel ar brezoneg ; hen-
nez eo ar gwir varz.

Kement-man 'zo da lavaret penôs, evit gwellat
stad e vro, 'zo eun dra hag a hall pep Breton
ober. An holl n'int ket skrivagnerien, barzed,
kanerien, mes an holl Vretoned a hall urzan o
bue herve gourc'hemennou Doue, hag evelse, ober
kalz a vad d'o Bro Breiz-Izel. Ma teu pec'hejou
ar bobl da wallan ar vro, vertuziou ar bobl a deu
ive d'he c'hrenvat.

Setu eno, otro rener, an nebeut giriou a zo bet
et'n em fenn skrivan d'ac'h diwarben skrid ar
barz *Pen-breton*.

Mat pe fall, deut int.

*Ho mignon lenner. Per an Huerou,
eus K...*

..

Lizer hon mignon a zo leua a boell.

A dra zur, ar Breton an eus karante evit e vro
a ziwallo d'ober droug d'ei o tennan warni, dre e
wall-vue, dismeggans Doue hag e goler. Forz pesort
hano, pesort micher, pesort doare an eus, pep
Breton mat a die bean eta, gwellan ma hall,
kristen.

Gant se, ar Breton an eus peadra da c'hounit
ar barozd ha da dennan bennoz an Holl-C'hal-
loudek war e Vam-Vro an douar ; mes gant se,
n'eus ket, koulskoude, peadra a-walc'h da vean
eur bobl bloc'h etouez ar poblou-all. En e greiz
ar C'hrouer a lakas donezonou a bep seurt ; red
e d'ean lakat ane da dalvezout.

Labourer oc'h ; impliet eta ho nerz da wellat
douar Breiz ha d'e druât ; moroer oc'h, laket eta
hoc'h ijin da gas he gloar a bell-bro dre ho nerz-
kalon hag ho loliou kaer :

Skrivagner oc'h, gret d'he yez dougen en ho
spered kant 'vit unan ; marc'hadour oc'h, prenet
eviti brud vat ha madou dre ho poell hag hoc'h
ijin ; den a vrezel oc'h, laket ho pue hag ho spe-
red d'he difenn ; mes forz pe zoudard, pe vartolod,
pe varc'hadour, pe skrivagner oc'h ; forz pegement
a vad a ret d'ho pro dre hoc'h ijin hag ho labour
kalonek, ze n'e ket a-walc'h, mar n'oc'h ket
kristen.

Gwechall, finvez an den a oa e vro ; mes hirie
finvez an den eo ar hed-all ; an den a zo 'vit e
vro, ya ; mes ar vro 'zo evit Doue.

Setu perak n'eus netra na welloc'h na kaeroc'h
egret eun den ha, dre ma poagn, herve e c'halve-
digez, d'ober enor d'e vro, a bed Doue d'e zikour
ha da rei e vennoz d'e labour.

N'e ket mat ober 'vel eun ozac'h bennak di-
boell hag a lakas had d'ober plouz. Hennez a lare,
goude eun devez ploman, hadet gantan eur par-
kad mat a ed en eur park temzet dru : « Pe vo
bolante Doue breman, pe ne vo ket, me lar vo ed
er park-se ! »

An ed a ziwanas, a zavas eur yeolen kaer ha
bloc'h, *mes ne reas greunen ebet*.

Evelse, e tigouefe gant labour ar Vretoned o
fiziout hepken war o galloud o-unan 'vit sevel
o Bro. Oberou, skridou, prezegenno, soniou,
gwerziou, priziou, had kaer int, plouz eleiz, mes
greunen ebet na vo enne, mar ne ve bolante Doue.

Gouel an Holl-Zent hag an Anaon

Ton : *Breudeur ni 'glev ho klemmou.*

Unan eus ar poaniou bras ez eo gwelet mervel.
Ha den 'bet, ma 'n eus kalon, nan hall harz d'hen
[diskouel,

Seul-vui e ve karante, seul-vui e teu daero
Da ruilhal 'hed an dioujod, pa c'hoarve ar maro !

Piou 'ta 'deuy da frealzi ar c'halonou rannet,
Da skuilh eur veraden joa en ine glac'haret,
Sur 'walc'h nan eo ket ar bed, 'vit se re divalo,
Eur Vam hepken 'c'hall neuze frealzi kalono !

Ar Vam-ze eo an Iliz, hi 'vir ar re varo,
Ha d'ar re 'van hi ive 'hall stanka an daero,
Rak ar maro na droc'h ket chaden ar garante,
Ar re varo hallowp c'hoaz darempredi gante.

O, levezet ar c'hristen pa dro e zaoulagad
'Trezek an Env 'lec'h an eus mignoned a vagad,
Tad, mam, breudeur ha re-all a zelaou e beden ;
Pebez dudi o fedi, pa ve start ar greden !

Ma 'man ar c'horf er vered, an ine n'eman ket,
Ar maro war an ine n'an eus tam krog ebet,
Henvel ouz eur luc'heden, 'rök ve ar c'horf sklaset,
An ine dirak Doue dustu a ve kaset !

Ma 'pouez war an ine-ze sam ar pec'hied marvel,
En em gav kerent stlapet e-barz eur lec'h izel,
Lec'h a hanvomp an ifern, a bado da viken,
Lec'h milliget 'lec'h nan eus nemet poan hag
[anken !

'Met bean 'zo ineou, ha kalz a ve ane,
A dremen dre eur lec'h all, eur lec'h pell ac'hane,
Evit peurbaeon o die, 'n eur dremen dre an tãn,
D'ar re-ze, da c'hras Doue, 'c'hellowp berãt ar
[boan !

D'abarde gouel an Holl-Zent, an Iliz d'imp a lar,
Kãt sonj eus hon mignoned, diwall da vont digar,
Kãt sonj dreist-oll eus ar re hon deus kement
[karet,

Hag o deus er Purgator poaniou meurbet kalet !

Nan eo ket en Breiz-Izel, bro an dud a galon,
E ve ken prim dilezet hag ankoet an Anaon,
E keit ma troo an heol tro-zro d'hon ilizou,
E welfer ar Vretoned stouet war ar beion !

Krog eo an deliou dare da velenãt er gwe,
Hag an amzer da yenan, da vean berr an de,
Tostãt a ra ar gouel kaer, gouel bras an ineo,
Ma lavar d'imp an Iliz soujal 'n hon zud varo !

Kempennet, o Bretoned, beiou ho tud varo,
Skuilhet warne, ma karet, mesket gant ho taero,
Dour binniget, mes dreist-oll, n'ankoet ket ar
[beden,

Ha 'vit hoc'h Anaon, Jezuz 'n ho kalon gret disken.
G. D.

TOLET PLE MAT ! ASURANSOU AN ILIZOU hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz
asuret o ilizou aboue lezen an Dispartii.

Ar re-ze a rajet mat 'n em asuri gant ar *Sa-
voyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra
diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had,
hag en tu-hont da ze a ra paean eiz gwenneg dre
vil nebutoc'h 'vit ar c'hompagnuezoù-all, hag a
ro eul loden eus he gounidoù da zikour ar veleien
ezommek.

Skrivan da E. AR MOAL (Dir na Dor), a labour
en tu breton an eskopti evit ar *Savoyarde*.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement asurans a zo,
asurans tãn, assurans tud, assurans loened, hag all.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou
en arondisamant Gwengamp. Skrivan da E. Ar
Moal. Gounid mat a vo.

Da gaout GWIN MAT HA RIT skrivet
22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompag-
nuenez vruet : *Etablissement agricole et com-
mercial des vins de Bordeaux.*

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENERDEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑOÙ-KONVERZ HA
KOUMANACHOU

AN AOTROU TONNELIER, 27, ball Charter, a zigemer arzoù

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AR GER.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar galleg ez aio a Vreiz.
FURNEZ AR GER.

Dalc'hit bepred d'ho prezoneg
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het.
Ouspenn ar Yez, e vo Dec'he d'
MILIS.

DAOU LIZER

Hag ar vam, evurus, a distroas d'ar gêr :
Bet he doa, eur wech c'hoaz, digant he mab lizer...
Eul lizer martolod ! Piou a c'hallio laret
Ar blijadur 'ra ze da galon vam nec'het ?
Gallout re al lizer digas d'ei levenez.
Alies a-walc'h ive he devoa bet enkrez !
Kement a digouezas d'he daoulagad gouela,
Ma ne gemere ken eul lizer hep krena...
Bezan oa intanvez, intanvez a bell 'zo ;
Ah ! he bue, kredet, na oa ket bet fero ;
Gwelet he doa ar mor o lonka he fried.
Hag o lezel anei hep toen, tãn, na boed...
Poan he diouvec'h hepken, he fizianz en Doue.
A reas, d'ei savet pevar a vugale :
— Pa vont savet, emei, e sikourfont o mam,
Ha d'am zro, mar gallan, e tiskwizint eun tam...
An diskwiz, paourkez mam, na vije ket d'ez ;
En eneb, he foanion a dlee c'hoaz kreski ;
Dre ma teuent en oad, a bep eil, he fotred
A deuas da vezan ive martoloded.
Hag he c'haron a vam a rannas adarre ;
Tii anê, en eun tol, a gollas o bue...
Ar mor, en e gounnar, evit gwasat he foan,
A rentas daou d'ez hag a viras unan ;
Ne chome mui ganti nemed he Benjamin !
— Ma Doue, emezi, lezet heman ganin !
An amzer o kerzet a zistan pep anken,
Mes sonj an dud varo, hennez n'hall ket tremen ;
He c'h-unan, peurlvian, gant he mab, pa c'halle,
War he ar Re-venezet ar vam gez a stone...
Eun devez, he c'haron gwasoc'h-gwas a frailhas ;
He bugel diwean d'ar zervij a yeas ;
O disparti poanion !... Ar vam skuilhas daerou,
He c'h-unan e chome bep frealz d'he foanion !
He mab a dalc'has sonj hag a viras ervad
Diwean gourc'hemen roet gant ar c'himiad ;
Eur wech bep pemzek de, pe bep miz, d'an hirran,
Hen a skrive d'he vam, — ha ze hep fazian. —
A-boan e oe lennet e tridas he c'haron :
— « Mam ger, eme he mab, hirie ez ou seder,
O laret d'ac'h ec'h in heptale pell d'ar ger ;
Marvad, abenn disul, disul, Gouel an Holl-Sent,
E c'hallin daoulina 'vel ma reu diagent,
Ha lavaret ganac'h, war o he benneget,
Eur beden galonek evit hon zad karet...
Ne ret ket a wad fall... Disul en em gavin...
Ar bugel ho karo da viken : Benjamin ! »

Ar c'haron a darzas... ha trizek merdead
A ruihas war ar pont, maro, beuzet 'n o gwad ! »
Hag eus tre he daouarn al lizer a gouezas,
Ha war leuren an ti, ar vam haour a zemplas...
Displega he glac'har piou a c'hallfe ober ?
He mab diwean marv... maro he mabig ker !
Ah ! gwelet he devoa meur a ouel an Holl-Sent,
Mes ken gwaz ha heman ne gavas war he hent...
Hag etre ar glac'har, an daerou, an anken,
An noz a dostaas, an noz d'ez ken yen ;
Elec'h kavout he mab evel m'he doa kredet.
He mab oa en Toulon, maro, lazet, friket !
En kreiz an noz tenval, mouez ar c'h'had o tremen.
A denne diganti hivoud ha klemmaden.
Pa gleve an avel o vouta war an nor.
Henvel ouz eur paour kez, eur paour o c'houll
(digor ;

Pa gleve anezan, tener a vouboul,
Hag o tiskan en ti dre veg ar chiminal,
E seblante d'ez klevet mouez he mabig.
O c'houll, en han' Doue, eur zonz, eur bedennig...
Ha, war an oad yen, enpad an noz stouet,
Ar vam a bedas start evit he mab karet.
Gwasat nosvez Annon ! Pa deuas ar beure,
Hi a c'hoantae c'hoaz mouga ar wirione ;
Mes al lizer garo, chomet war leur an ti,
Henvel-tre ouz eun test, a greske he gouli :
— O Doue, ma Doue, sikouret, me ho ped,
An intanvez en poan, hec'h-unan war ar bed !

AR YEODET.

Prat, 25 here 1908.

GOUEL BRIZEUK

en Arzano

Ar Vretoned, sionaz, n'anaevont ket trawalc'h
Brizeuk, ar barz bleo-melen hag a ganas, setu eun
triugent vla bennak, e Vam-Vro Breiz-Izel hag e
zousig Mari, kenkoulz en brezoneg 'vel en galleg.
Hirie, pa deu spered Breiz da zihuni en kalonou
eul loden vras eus ar Vretoned, e kaver dudi ha
joa o tizrei warzu ar re a zikouras derc'hel beo ar
spered-se, e kerz an amzer dremenet, hag e teuer
gant doujans da stoui dirake, ha da glask war
gwenojennou Breiz, roud o c'hammejou.
Setu perak 'zo bet gret, ar zun dremenet, eur
gouel en enor da Brizeuk en Arzano, ha savet eur
menhir e-tal ster ar Skorff, en pont Kerlô, elec'h
ma teuas alies Brizeuk, pa oa yaouank, d'azean
e kichen Mari, o zreid e-pign'us d'ar waz ha lipet
gant an dour o tremen.

An otro Saib, rener *Kloc'hdi Breiz*, an evoa
savet ar gouel-man. Kentan tra oe gret, eo laret
eun oferen en iliz Arzano, an iliz lec'h ma oe
Brizeuk kolist, ma respontas ken alies d'an
« Introïbo », ha ma sônas ken lies a wech kloc'hig
ar gourreo. Eur zonz mat eo bet hini miguoned
Brizeuk, o vont, da ze hanter-kantved e varo, da
gas d'ean eur beden dre an hent a gemeras ken
alies e beden hen.

Eus an iliz, ar bobl, — rak eur bobl a dud a
oa en Arzano. — a yeas d'ar *Pont Kerlô*, elec'h
ma 'n evoa lezet ive ar barz eul lod eus e galon.
Otro person Arzano an evoa bet komzet en iliz
eus karante ar barz evit kement a oa eus e vro,
ha dreist-holl 'vit he c'hizion fur hag he fe ; en
Pont Kerlô, eun toullad Bretoned ha barzed, an
doktor Ar Garec, Loeiz Herrien, Botrel, an di-
mezel Riou, ha dreist-holl an otro Saib, a gomzas
eus karante ar barz evit e Vreiz-Izel hag evit ar
Vretoned, e genveudeur.

Er banvez, da greizte e oe meulet adarre Bri-
zeuk, ha d'abarde, 'vit ober enor d'ean ha lakat
da dridal e galon en e va, oe kanet brezoneg,
dauset ha gouennet er c'hiz a blije d'ean pa deue
eus Pariz pe eus an Itali da ziskwizan etouez e

vignoned, en eur heuilh er pardonioù hag er
foarion gizioù karet e dud koz.

Ha kement-man, Bretoned, ar gouelioù-man en
enor d'ar varzed maro a zo eur skouer eman
Breiz o hadvevan hag he spered o tihuni en he
c'hreiz. Gwelet ho peus ar marichal, pa fell d'ean
lakat eur mailh neve en eur chaden goz, e tom
anei ouz an tão, 'vit lakat da 'n em stagan an
houarn koz hag an houarn neve.

Evelse e tigue ganimp, oc'h enori ar varzed et
da Anaon ; o toman o c'haron hag hon hini ken-
ver-ouz-kenver, e hadskoulmomp chaden ar vro,
chaden ar rumadoù tud eus hon gwad tremenet
en hon rôk hag unanet dre ar memes spered.

Gras d'imp, Bretoned, da stagan ouz ar chaden
sour gret gante, eur mailh ac'hant gret ganimp.

X...

MIZ DU

Eat miz here en e hent,
Antronc'z 'man gouel an Holl-Zent.
'Us d'am feun e taruj ar maro,
Tostaat a ra d'in an termen !
Souden ma mouez raouliet a davo,
Digasit d'in prim ma zelen,
Rag arôk plega,
Fell d'in c'hoaz kana ;
'Rôk mervel, kanin mil meulendi,
D'ar vro vad he deus va maget ;
Ra lavarint 'kreiz ma angoni,
Ma Doue... Breiz-Izel, m'ho kar bepred !

Kala-goan, kalet ar greun,
Delioù kouezet, lennou leun.

Mat eo hada an douar,
War an diskar eus al loar.

Segalig sant Andrez,
'Vo deut Nedeleg pa deny ermez.

Hag o neza emoc'h-hu c'hoaz ?
Gouel sant Andre a zo warc'hoaz.

Eul linsel wen ha pemp planken,
Eun torchad plouz dindan ho penn,
Pemp troatad douar war ho korre,
Setu holl vadou ar bed-me !

J. C.

BREURIEZ AR BREZONEG

GOUEL PRAT

Parouz Prat a zalc'h bepred ar renk kaer he
devoa kemeret, adalek en eur gentan, evit goue-
liou *Breuriez ar Brezoneg*. Eur pemp kant ben-
nak a dud a oa deut adarre disul da di al leanezed
da gemer o lod er gouel roet d'e, koulz laret, gant
o bugale.

Re divezat en em gavan da gontan ar zul-man
doare ar gouel. Ar zun a deu, e vo frankoc'h ar
plas. Setu aman, da vihanan, roll ar prijou :

Pôtrez

(11, 12, 13 vla, ha skrivet gante war o c'haierou).

Priz kentan : Yves Lagadec.

E'il priz : Joseph Denis.

Kentan accessit : Paul Dumoing.

E'il accessit : François-Marie Jégon.

C'houec'h-all na oant ket deut d'ar gouel :
Charles Le Roux, Emile Even, Eugène Guyomard,
Pierre Martin, Yves Fiblec, Henri Béguec

AR PITIVER

An dud 'zo breman, siouaz, n'ouzont ober netra
Heb ar weren dirazo, heb eva hag eva.

Ar pitiver! komz hag a lavaret war eun ton
joaüs, evel pa ne ve d'he heul nemet laouene-
digez ha joa, hag a zo koulskoude pen-kaoz lies
a wall-eur! Eur zebiant an eus da veza dinoazus
ha padal dindan eul liou sklear dem-alaouret e
kus eun tan hag a boaz, eun ezen dom hag a zav
d'ar penn, eun ampoezon hag a ra d'an den
koueza, betek memez trum-ha-trum, e karrig an
Ankou.

Kaout a reer hirio divlas ar gwin ken ruz, ken gwenn,
T'an a ranker da lonka, t'an livet e melen.

Ar gwasa a zo, eman ar c'hiz da lavaret e tigas
nerz d'an dud, al likeur-ze a reer anezan : gwin-
ardant, dour-a-vuez, betarabez.

Ar beajour o vont gant e hent, ar micherour
skwiz o labourat, a gemer ar pitiver gant ar zrasa
fizians n'hen deus ennan nemet madelez ; n'eus
douetans ebet, oc'h e gemer, e ev alkoal hag eun
ampoezion. siouas d'ezan ! E leac'h startaat, kren-
vaat e izili, an hini melen a ra warnezo eul
labour noazus dreist kont, hag o dinerz, e fin
tout. O ! penüs lavaret ar gaou a ra ouz ar chorf
ar pitiver kemeret alies-alies !

Done en e vadelez a reas ar winiën,
Evit rei nerz d'hor c'halon hag e renta laouen ;
Etre kerent, mignoned eur banne 'zo yac'hus,
Mes d'ar gwin deomp goustidig dre m'az eo gwall-
[nerzus.

Tolomp, tolomp evez mat, beilhomp, en han' Doue,
N'eo ket dies en em voaza, dreist-holl ouz an hini
[kre.

An hini krenv, ar gwin-ardant, a ra eur gaou
bras, hervez ar vedesined desketa, ouz ar stomok,
an avu, ar galon, ha lakaat a ra da wrizienna e
kreizen an den klenvejou eus an diesa da barea.
Ober a ra ive gaou ouz e spered, e vemor, en eur
zevel d'ar penn, hag e lakaat a ra da benfolli, da
glask en em venji, ha zoken, da goll e skiant
betek ar rest eus e vuez.

Eur wech m'ho po kemeret eur pleg ken divalo,
Satan ho kaso ker pell ma ne gavot distro.

Evel eur mignon goloet, traitour, ar pitiver en
em zil e pep leac'h ha war bep seurt digarez.

Tud yaouank ha merc'hajoù ouспен en eur barrez,
A stag d'ar gwin, d'ar c'hafe, daou ha daou alies ;
D'ar morlejez, d'ar peurzorn ha ra vez eurenjou,
A veac'h ma vez respetet oad ar vugaligou,
Ene en despet d'ezo, e vezo plantet gwin,
Ha pa c'heller o mevri, ne reer nemet c'hoarzin.

Pa en em gaver laouen pe en dristidigez, pa
'z eus eur pez labour bras d'ober pe da zeiz sul pe
ouel, pa 'z eer d'ar marc'had da werza pe da
brena, e pep afer, pa en em weler, pa en em
gwiteer, pe eo tom pe eo yen am amzer, da zeiz
baziziant pe interamant, n'eus forz, ar pitiver a
rank mont en dro, a gav e du ato.

Da zeiz sul, da zeiz gouel, a boan achu an
oferen, achu ar gousperou,

Kartou ha dominoù a zo prest war an dol,
Setu digor ar c'hoari, ha gwin-ardant bep tol ;
Ar gonid 'zo d'an hostiz, ma 'z eus gonidegez,
O tere'hel dor an ifern dibrenn ha dialc'houez.

Pebaz tra iskis eo ar pitiver ! Gwellit ar reu-
zeudig-se diwar an dour-a-vuez o vac'hata e wreg,
o lezel e vugaligou da zua gant an naon, o vallozi
war e dad, e vam daoubleget gant an oad ; ne
respeto ket memes o bleo gwenn.

Ar vugale, oc'h e welet diweat er bourg, en
henchou, a ra an hu warnezan, a sklap pri ha
fank outan, evit ma tec'ho kentoc'h a ze d'ar gér ;
mes red vezo alies dont d'e glask, d'hen dastum
e korn-tro an hent, pe er foz, e kreiz ar vouilhen
ha d'hen stleja betek ar gér, kailharret holl eus
ar penn betek an troad : eun donjer eo evit an
holl.

Ar re tschet da eva ne dint mui kristenien,
C'hoant am be da lavaret ne d'int ket tud zoken,
Disken a reont izelec'h eget an anevall.
Al leon mut dieuz re gotad a or en em ziwall.
Eun ozac'h eas da garet pa vez diwar an dour,
Diwar ar gwin 'zo eur bleiz a ra spont e wreg paour.

An dud honest a zo leun a zispriazans evitan, e
wreg a skuilh daelou c'houero, e vugale en em

goll dre er skouer fall a welont abeurz o zad, e
ampresterien a c'houlou e arc'hant ; skiant vad ar
mevier a dec'h tam-ha-tam, ar micherour a labour
ar c'hoad d'ober e arc'hed ; an holl a dro kein
d'ezan... Mes petra ra ze, 'pad ma hen devezo da
eva gwin-ardant leun ar veren :

Kalz tud koz a ro gwall skouer, kalz pennou-tiegez,
Na reont van 'vit ankenia bugale ha gwragez,
Dirak gwer ha boutailhou e chomont da c'hlaouri,
Pa skuilher daelou c'houero war oaled yen o zi.

A-walc'h ve lavaret d'ar mevier eur ger, ez eo
eun digalon, hag e savfe war begou e dreid gant
eur goler ruz, evit diskouez eo eur pôtr mad,
n'an eus ket aon rak e skeud, ha koulskoude en
em lez da veza pilet d'an douar gant ar pitiver.
Plega 'ra d'e bleg fall, en em rento ra sklavour
d'ar gwin-ardant : n'eus mui ennan nag enor, na
konstianz, na dalc'h : n'eo mui eun den.

O pitiver, brasa enebour ar micherour, al la-
bourer ! Ampoezion hag a denn e vuez digant an
den ar c'hrenva, pen-kaoz a drubuilh, a vizer !
'Beuza a rez e spered hag e galon. Kriz ha didruet
a-walc'h out, pa zeuez zoken d'e flastra. Treitour
pitiver ! Keit ne vezit ket dilezet gant ar miche-
rour, e vezo mizer, mizer, mizer !

Eul lestr karget a zanzev, ma teu da bensea,
Eus kement vad a zouge ne jom gantan netra,
Ar mor, en eur c'hinaouad, 'oar lonka tout a-bez...
Ouz ar mor te 'zo henvel, pitiver didruet !

J. C.

BREURIEZ AR BREZONEG

Lenn a reomp en *Kleier Plouneve-Moedec* :

Lennet n'eus an holl en *Kroaz ar Vretoned*,
disul diwezan, penüs oa komjo d'ober eur gouel
brezoneg en Plouneve, evit an holl, hag ispisial
evit ar vugale a disk lenn ha skrivan ar bre-
zoneg.

Gout ouzoc'h pegen talvoudus eo evit ar bugel
derc'hel d'ar brezoneg, yez e dud koz. Fidel d'ar
brezoneg, ar bugel a chomo ive ezetoc'h fidel d'e
religion ha d'e vro. Ne c'hoantaot ket ken prim
kwitit eun de Breiz-Izel, evit mont da Baris da
fritan paourante pervuian, ha marteze da goll e fe
hag e enor, evel ma ra kalz hirie, siouaz !

Ouspen : ar brezonek na harzo ket ar pôtr pe
ar bôtrez da diski er skol. Pell a'chane. Lenn ha
skrivan brezoneg a ro kals a lans d'ar bugel da
skrivan, da gomz ha da intent ar galleg ; ha setu
aman penüs : ar bugel, oc'h anaveout an dra en
brezoneg a disko aezetoc'h e hano en galleg, hag
a delc'ho prim sonj dioutan, rag gout a rey petra
a ziniñ ; evel eus gwelset ar stum da skrivan en
brezoneg eur gir, ec'h entento primoc'h ar stum
neve d'e skrivan en galleg hag e telc'ho sonj
dioutan.

Setu aze petra ra da botred vad *Breuriez ar*
Brezoneg esat ar muian ma haloit lakat ar vu-
gale da diski lenn ha skrivan ar brezoneg, hag
evit-se e savoint aman hag ahont gouelioù kaer
hag e rooint prijio evit rei nerz kalon d'ar vugale
war ar studi-ze.

Eur gouel evelse a vo eta e Plouneve prestik, me
esper. Mez arôk, gout ouzoc'h, ar « breuriez » a
ali ar vugale da gemer *Kroaz ar Vretoned* evit
ma halfoint ganti skrivan ha lenn o yez, o bre-
zoneg ; hag evit se e kaso ar Groaz vras d'e ha
d'o zud evit eiz real ar bla, elec'h c'houezek real
(2 francs an lieu de 4 francs) da laret eo evit kasi
3 gwenneg ar miz.

Ar re o defo roet o hano a deuy da vean eus
Breuriez ar Brezoneg ha a vo kaset d'e c'hoaz
peb a gaier war ar marc'had. Hag ouспен-ze, lod
o devo en kement « c'hoari-sac'h » pe « loterie »
a vo gret gant ar gouelio, a lod ive en ter ofern
laret evit ar breuriez bep pla.

Ouspen c'hoaz ! Reer *Kroaz ar Vretoned* ha
tud vad all a skriv d'in o devo prijio kaer, levrío
brezonek evit ar vugale 10, 11, 12, 13 vla pe war
dro hag o defo roet o hano evit ar brezoneg.

Ar prijio-ze a vo roet dirak an oll de ar gouel
brezoneg er Patronaj elec'h e vo miret ouспен eur
plas a choaz evit ar vugale o defo roet o hano.

Da c'hortoz, parousianiz kez, laret d'ho vugale
diski lenn ar brezoneg ha rei holl o hano, pôtrez
ha merc'had, d'an otro kure, evit kaout *Kroaz ar*
Vretoned pe da vihanan evit kaout droad da brijo
de ar gouel.

Evit sikour ar vugale, ter gwej ar zun, d'ar
meurz, merc'her ha gwener d'abardae, goude ar
skol, e vo er patronaj eun hanter eur lennadeg
vrezoneg evit ar vugale a garo dont. Aliet e da
zont oll an deio ze.

N'halliet ket komz gwelloc'h ! Chilaouet mat,
tudou Plouneve ouz mouez ho « Kleier » !

MA BREIZ-IZEL

War dôn : *Kloaregig ar Rouz*.

En Breiz-Izel me 'zo ganet,
Na kaerat bro, na kaerat tra !
En Breiz-Izel me 'zo ganet,
Elec'h 'zo c'hoaz fe, lealded.

Bro evelti n'an eus hini,
— Na kaerat bro...
Me deu gant justiz d'he meuli.

Rak e-touez oll broio ar bed,
Ar renk kentan d'ei 'zo dleet.

En hon Breiz e kever madou,
N'o deus ket a briz er c'heriou.

Yec'hed a leiz, nerz ha furnez,
'Zo gwelloc'h 'vit pinvidigez.

Enni ez eus c'hoaz plijadur,
Evel neb lec'h, me hen asur,
Plijadur yac'h hep nec'hamant,
Hag a zo dreist aour hag arc'hant.

Pelec'h 've gwelset pardonioù,
Ken kaer evel 'n he ilizou ?

Holl sent Breiz a ve enoret,
Dre werziou gret gant he Barzed.

Rak ar brezoneg, a gredan,
Eo kosan yez zo er vro-man.

Ar mor, an douar 'ro bevanz,
Da bep-hini en abondanz.

Hag evit evaj, pervuian,
'Zo jistr mat ha dour ar gwellan.

Nep lec'h n'ez eus yaouankizou
Ken flour gant o gwiskamanchou.

N'eo ket c'hoaz he martolodet,
Er broio pell a ve gwelset ?

O tifen dispost o drapo,
Hag o vervel evit o bro ?

He soudarded a zo ive
Ar c'hentan war droad a vale.

'Barz en pep lec'h hi zo brudet,
Kenkoulz gant Saozon ha Prused.

'Rak gouveet 'deus alies,
Trec'hi warne 'zo gwall dies.

Kentoc'h mervel 'vit traitouri,
Hennez eo lavar pep-hini.

Ha ma 've red difen o fe,
Eviti sur int a varfe. !

'N eur achui kanomp breman,
A vouez uhel, an diskan-man :

D'hon bro garet, d'hon Breiz-Izel,
Ni a vezo bepred fidel !

Y.-M. S., koz labourer.

Lenn war ar **FEIZ HA BREIZ** diwezan :

Perak e ranker kredi ez eus eun Doue, gant an
aotrou abad Caer ; ar brezoneg er skolioù, eur
pennad dispar war ar poent-se gant **KLAODA** ;
m'ho tesko da ober ar skollig-vij, eur gontaden
fentus eus ar c'hoanta gant L. B. ar Sp. P'edon
war bont an Naoned, eur zôn nevez gant an tön ;
keleier ha divinadennou. Ouspen, daou bennad
war spered ar Vro, e galleg.

Da gaout *Feiz ha Breiz*, kaset ho koumanant
d'an aotrou abad Cardinal, Kastel-Paol. Eur skoed
ar bloaz.

AR GER VILLIGET

GANT
LA OUK

(KENDALC'H)

II

— « An holl a zo e-barz ar syndikat. »

— « Petra a fall, Fanch? Ne lares ket c'hoaz breman 'zo tri miz ec'h eo tud ar syndikat a zo 'n ez ijinez holl « sozialisted » digristen ha ne c'houlches biken o heuilh? N'en em drompfen ket o sonjal ne oas ken ar memez hini, ma den paour. »

— « Nan on ken ar memez hini? e mean, e deod hanter-notet; nan ejen ket er syndikat? Biken n'em eus komzet d'it a dreo evelse. Ro peoc'h d'in gant da zorc'hennou ha ro d'in da zibri; ze na zell ket ouz ar merc'hed. »

Ar c'homzo-ze, na oa ket bet kustumet da glevet 'boue oant dimezet, a raes d'Anna diroll da ouelan.

— « Allaz! emei, nec'h et e oan ganit arok, med gwasoc'h poaniet e vin c'hoaz breman, rak biken n'em ije sonjet e vijes kouezet er poent-ze. Gouzout a ran breman perak ne skrives ket d'in alies erfin ha perak ne c'houltes ket, an deio tremenet, laret d'in petra az poa gret gant hon arc'hant. Ra vo milliget an de mach is d'ar ger; kant gwech gwelloc'h e vije bet d'in bean chomet aman, nag e vijen marvet; da vihanan n'em mije ket bet ar glac'har am eus hirie. »

D'ar c'homzo-ze, Fanch na gavas gir da respont; mont a raes er-maez en eur c'hrosmolat etre e zent.

Diou envez hir e chomas ermaez. Laret poanio Anna e-keit-se e ve stard. « Daout hag-en e ven barnet, a zouje, da gouean er rouden fankus ha mezus pleustret gant ken lies a hini en dro d'in! Biken n'hallin bevan evelse! O Fanch! pegement e teus tromplet ac'hanon! »

Ne zouje ket, ar plac'h paour, a belec'h e teue an drong; ne sonje ket pebez tenvalijen a oa deut war e vuc p'he devoa kwitaet anean; pegement an evoa ezom eus he dousder, eus he c'harante, an den krenv ha ter ma oa. En gwirione, salv e vije d'ei bean chomet gantan, med pa zouje e dre m'an nevoa ankouaet anei e oa troet d'evan, e fazie, rak dre ma sonje re enni eo a oa.

Sevel a raes diou pe der gwech evit mont da glask anean med neuze e teue war he spered ar vicherourien he devoa gwelet o tremen meur a wech dre ar ru, i meo, stlejet gant o gwraze hag o slejal ané a zeo hag a glei en eur youc'hal hag en eur ganan, eur bagad kanfarded o redek war o lerc'h ha sellou an holl paozet warné gant dispriz ha rukun. Sevel a re he c'halon o sonjal en se: « Arruo sort a garo, biken n'en em diskoueo evelse!... » hag e hadkoueo war he c'hadoar.

Erfin Fanch a digoueoas. Sonezet e oe Anna o welet e oa kazi divevet 'med na laras gir d'ean. Serviji a raes e goan 'vel d'ar c'hustum; ne debras gozik mann; hi a zelle anean poaniet. Mont a rejont da gousket hep dale. An de warlerc'h pa zavchont Fanch a laras d'ei:

— « Anna, glac'haret on da vean gret kement a boan spered d'it dec'h da noz; kement a teus zonjet diouzin a zo gwir, med ken hir e kaven an amzer pa oas tec'h! kustumet em oa chom e-traou ken na vije poent mont da gousket hag evelse e kustumis ive evan a dam da dam. Pardon ac'hanon! Breman pac'h out aze d'am zikour me a dilezo ma gwall-gompagnunez hag an evach. Dec'h da noz az poa ma gwelet meo evit ar wech kentan boue c'homp dimezet, an hini diwean e vo ive. »

O klevet anean Anna a oe teneraet he c'halon.

— « O Fanch, emei, 'boue pell 'zo ec'h out pardonet, med aon am eus rak ar vignoned a teus gret; ar re-ze a rey o galloud evit ober d'it hadkouean. Me zonz e ve gwelloc'h d'it klask labour e-lec'h all nag e kollfemp eun dra bennak. »

— « Bez dinec'h, e mean, breman pac'h out aze, ne rin ken forz dioute hag eus o gwaperéz. »

Re a fianz an evoa ennan e-unan ha gwelet hon deus breman zouden en pesort stad trist an nevoa 'n em laket erfin, hag ar pez a oa ar gwasan, e bried hag e vugale da heuilh: ar glac'har, an dienez hag ar c'hlenved a deu dalc'had warlerc'h al lonkerez, an evoa kemeret troad en e diegez; da c'hontaat e ve ec'h afent ermaez rok bean peur-dispennet anei.

(Da heuilh).

LAOUIK.

AR ZOUARD YAOUANK

War don: Kerne

Mar zo en bué an den eun de meurbed poanuis, Eun de a dristidigez hag eun de glac'harus, Eo zur an de glorius ma teu da gimidi Diouz e vro, e dad, e vam, e gerant hag e di, Evit kemer pen an hent ha mont pell diouz ar ger Da serviji he vro, Frans, he rouantelez kaer. An disparti a ve kri, ankenius eo zoken, Rak ar galon 've gwasket gant mil sort a anken. Dilezel a rer a gren kerent ha mignoned, Bro ar c'havel, ar barouz, ar menezioz karet, Mes an den yaouank kristen a drec'h prim e

[c'hac'har, O sonjal penós e vro hen galv evit he gloar. Kompren a ra an enor 'zo laket 'n e zaouarn, Da vont da zifen e vro hag an dud he gouarn, Evit ma reno bepred ar peuc'h, ar garante, Etre e holl genvroiz, ar poblou etreze. Gant eur sonj ken dadius an den a zo nerzet, Hag a drec'h en eun tol kren glac'har ha poan

[spered, Dilezel a ra seder kerent, amezeien, Na vo gante a-vreman 'met a galon hepken. Erru ebarz an arme en em lak holl a gren, Etre daouarn e vestrou gant eun doujanz kristen. Ober a ra e zever 'vel eo gouc'hemenet. Heb hirvoudou na klemmou, hep dilec'h na remet. 'N em gomporti 'ra dre holl herve doujanz Doue; Bean e vo soudard mal: miret a rey e fe. E galon a vo divlam, e obero leal, Rag bean e vo fidel d'ar gir roet gwech-all, Da de pardon ar barouz d'ar plac'hig a gare, Da viret d'ei e galon hag e holl garante. Bez laouen, o ma bro Frans, ha bez sioul hirie, Rak difennet mat e vi gant da holl vugale. Ya, keit ha ma vo en Breiz tud yaouank gwir

[gristen, N'a tevo ket da spontan rak da enebourien. Ha te, soudard yaouank, bez bepred kalon vad, Bez prest da zifen da vro, da skuilh 'viti da wad. Sur e kavi war da hent poanuis ha trubuilho, Mes kinnig 'n e da Zone hag hen az sikouro.

Erwan PRIGENT,
soudard.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Prenan e wad digant eun den beo. — E New-York, n'eus ket pell, e oa klanv eun den bennak en unan eus klanvidioz ker, hag e lavaras ar vedesined e varche, nemet strinkellet e vije en e wazied gwad eun den yac'h. Kavet e oe eun den da werza evit-se eul livr euse wad ha paet eo bet d'ezae dek dolar, ar pez a ra hanter kant lur.

Eur bugelig daou vloaz warn-ugent. — En eun ti war ar maez, e-kichen eur ger hanvet Cove, e ran-vro Devonshire, Bro-Zaoz, ez eus eur plac'h yaouank daou vloaz warn-ugent ha n'en deus kresket tam he c'horf abone ne oa nemet pemp bloaz. N'he deus ket c'hoaz kollet he dent kentan hag, evit ar vent hag ar skiant, aman henvel-tre ouz eur bugelig pemp bloaz.

Maro eun den pinvidik-mor. — Unan eus pinvidien an Amerik, e hano Antonio Bolio, a zo marvet e bourz eul lestr mordreizer, al Lucania, p'edo o treizi eus Liverpool da New-York. War ar mare, unan eus e vibien, Gustavo Bolio, en em gave ive war ar mor bras, o treizi etre an Haor-Neve ha Liverpool. Gallet e oe kas d'ezan ar c'helou eus maro e dad dre an telegraf dior-jalen.

Bara an naonegez. — E sav-heol eus ar Rusi ez eus kernez ha naonegez hag o veza n'eus ken a vlead e reer bara gant viou (no) pesked, a zo a leis anezou er steroiu. En Iverzon pa sav naonegez e reer bara gant avalou-douar. Ar bara avalou-douar-ze a zo blazet mat war a leverer.

Penós e vevont ha penós e varvont. — « An Itron-Varia 'n Amzer a zigas an dud ebarz. » Evelse ve lavaret, ha gwir eo alies, dreist-holl, pa deu an Ankou da rei d'ei eun tol zikour.

Pa deu heman, gant e graban dir, da waskan war doull ar bater, ar re mutian dirankon ha mutian aheurtet a deu da 'n em zonzal. Forz piou veint, franmasoned zoken, e teout neuze da c'hervel ar beleg, ar beleg hag a doa bet evitan kement a gaz hag a zismeganz ken ma oant potred vat.

Setu aman, daou den evelse hag o deus gret kalz a zispiljadur d'ar franmasoned o vervel evel m'o deus gret. Unan ane, Maruejouz, hag a oa bet ministr gant Combes, an eus hastet klask eur beleg dal ma 'n eus 'n em zantet skoet. Egile, Cheminai, franmason, an eus bet e holl zakramanchou ha goullet bean beziet gant an liz en douar binniget.

Ha setu perak ar franmasoned a zo en kanvo. Ba, tudo, ne ouelet ket, pa vefet war hoc'h eur diwezan, ma ve lezet amzer ganac'h, c'houi hasto ober evel Maruejouz ha Cheminai, gervel eur beleg, ha prim!...

Gant piou ec'h a an arc'hant? — Setu kaset ar « budget » d'ar Gambr, da vean votet. Kreski ra adarre an dispignou, ha war ar memes tro, e kresko ar c'hontribusionou seitek ha triugent milion a gresk a zo da vean ar bla 1909 en tu-hont d'ar pez a zo ar bla-man.

Ar « budget » a dap breman pevar miliar, da laret eo, peder gwech mil milion.

Ha d'ober petra an Doue ec'h a kemmt a arc'hant? D'ober lies a dra ha n'ouzoec'h na me ive; mes eul loden vat koulskoude, a haller lavaret, a ya da lardan ejened bras ha bihan ar gouarnamant.

Ar gouarnamant an evoa ezom breman 'zo tregont vla nemet tri pe bevar c'hant mil mevel evit ober e labour, an eus szom breman nao c'hant trizek mil kant daouzek ha pevar-ugent. Kontet gante o gwraze hag o bugale, kontet ouzpen, micherourien hencho-houarn ar Gouarnamant hag e tapfet ezet pevar milion a dud da voeta beg bla diwar ar c'hontribusionou.

Eur miliar, a dra zur, a ya gante, ha marteze ouzpen.

Mes an hanter eus an arc'hant-se a zo gwall-dispignet, rak ar gouarnamant a blij d'ean lakat tri vevel lec'h ne ve ezom nemet unan, abalamour, pa ve votet, kaout evitan eur vouez ouzpen.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

GWENGAMP. — Laeronsi. — Eur marc'hadour saout, hag a oa en em vevet, a zo bet laeret digantan e yalc'h epad ma oa kousket war ar Vali. Tost da gant lur a zo aet gant al laer.

Darvoud. — E Gras-Gwengamp, merour an aotrou a Geronartz a zo bet spontet e gozeg gant an tren o tremen ha diskaret diwar e garr. Ar rojou a dremenas waroan o tarr d'ezan unan eus e zivesker hag o tilec'hia ebou.

BREIZ-UHEL

ROAZON. — Stokadegou trenio. — Ar zun dremenet e kichen Roazon, eun tren a vea-chourien, o tout eus Redon, a stokas ouz eun tren marc'hadourez. Drailhaded a zo bet ha meur a zen gloazet. E-touez ar re-man eur Breton a vro-Leon, Gouic eus Moelan, a oa o vont d'an Haor-Nevez, a zo bet torret d'ezan e c'harr.

Eur stokadeg-all a zo bet e kichen Chateaubourg. Eur c'harr a varc'hadourez a zo bet draillhet. N'eus den tizet, a drugare Doue.

Merc'hed

Rummad kentan
(11, 12, 13 vla).

KENTAN LODEN

(Ar re o deus roet kaierou).

Priz kentan : Aimée Briand.

Eil : Maria Guégan.

Trede : Francine Le Bras.

Pecare : Fernande Cocard.

Kentan accessit : Elisa Etienne ha Léontine Quilin.

Eil : Marie Rivoallan.

EIL LODEN

(N'o deus ket roet a gairou).

Priz kentan : Louise Rivoallan.

Eil : Léontine Quilin.

Trede : Jeanne Le Mô.

Kentan accessit : Madeleine Tilly.

Eil : Françoise Calvez.

Eil rummad

(9, 10 vla)

KENTAN LODEN

(Ar re o deus roet kaierou).

Priz : Antoinette Quintric.

Accessit : Yvonne Droumaguet.

EIL LODEN

(N'o deus ket roet a gairou).

Kentan priz : Bernadette Rolland.

Eil : Anna Le Mô.

Kentan accessit : Caroline Cocard.

Eil : Joséphine Droumaguet.

Trede : Anna Pennec.

War ar merc'hed a zo en Breuriez ar Brezoneg,
e vanke :

Yvonne Kernanet, Marie Le Roux, Jeanne L'Hévéder, Céline Gauter, Emma hag Yvonne Trividic, Mélanie ha Joséphine Coadou, Apolline Adam ha Caroline Le Roy.

Ar re o deus skrivet ar muian pe ar gwella
war o c'haierou eo, etouez ar bôtred :

Yves Lagadec ha Joseph Denis ; etouez ar mer-
c'hed : Antoinette Quintric, Yvonne Droumaguet,
Aimée Briand, Françoise Le Bras.

D'ar c'houec'h o deus skrivet ar muian war o
c'haierou vo kaset reo neve, ma hadkemeront
Kroaz ar Vretoned, adalek miz du, ha chom en
Breuriez ar Brezoneg. Ar re-all a zalc'ho da
skrivan war ar memes kaierou.

Ar bôtred hag ar merc'hed bihan n'int ket deut
d'ar gouel a hallo kavet hep a briz, ya, mar had-
kemeront o renk en Breuriez ar Brezoneg ar bla
da zont. Evel hon doa lavaret, ar priz a zo eiz
real ar bla, elec'h 16 real.

Ter blac'hig a zo war dont a-neve er Vreuriez ;
bet int o lenn : Anna Pennec, Françoise Calvez ha
Bernadette Rolland.

Digemeret e vefont gant joa, ha lod o devo gant
ar re-all er prijou hag er gouelioù, mar kemeront
Kroaz ar Vretoned.

Setu neuze daou ha tregont a vugale eus Prat.
Ni a lavar, hag ouспен lavaret, diskonel a reomp
ive, ne vankfomp ket d'e. Int ive ne vije ket mat
d'e mankout d'imp, pa hon deus laket gante betek
breman hon foan hag hon labour.

Ha neuze 'ta, ar pez o deus desket n'eo man
c'hoaz. Ouspen deski lenn 'zo d'ober, red eo deski
skrivan ha n'e ket 'n eur bla nag en daou, e haller
deski an eil hag egile : red 'zo, da vihanan, tri ha
pevar bla.

'Vit rei da gompren sklêroc'h c'hoaz gant pege-
ment a aked e klaskomp mad ar vugale, setu aman
ar pez omp en sonj ober evite, pa gwitafont, da
bevarzek vla, Breuriez ar Brezoneg.

E sonj omp neuze lakat evite Kroaz ar Vretoned
eur skoed ar bla elec'h 16 real, hag ouспен,
rei da bep hini ane hag a dalc'ho d'ar gazeten hep
a « livret Caisse d'épargne » pe, da vihanan,
lakat ane da dennan, mar 'n em gavfe mui a vu-
gale evit a « livret ».

Mes ne vo nemet ar vugale vo bet daou vla, da
vihanan, en Breuriez ar Brezoneg, a ouiso lenn
ha skrivan brae ar Brezoneg hag a hadkemeront
goude, 'vit eur skoed ar bla. Kroaz ar Vretoned,
a gement a hallo kaout eul « livret » evelse.

Dalc'homp eta da Vreuriez ar Brezoneg ;
bean 'zo enni gounid evit ar vugale, gounid eu
pep doare : gounid evit ar c'horf, gounid evit ar
spered, gounid evit an ine.

Evelse, 'beun ar bla den, mar be bolante Doue,
vo gwelet kaeroc'h c'hoari en Prat 'vit ne 'zo be-
gwelet c'hoaz betek breman : eur bodad mat a
vugale o lenn, o kanaan hag o skrivan Brezoneg,
eur pez-c'hoari gret gante, neventi hag a rei
dudi ha plijadur koulz d'ar re vras 'vel d'ar re
vihan.

N. B. — Kentan oferen Breuriez ar Brezoneg a
vo lavaret en Prat. — Arc'hant ar c'houmananchou
neve pe da nevest, a vo kemeret gant an otro person
hag an otro kure. Eiz real eta pep hini.

N'ANKOUEZ ZOMP KET HON ANAON

War lein mene Kalvar, ar Groaz,
Aboue daou de, a oa e noaz ;
En dro d'ei ar rec'hel frailhet,
Ha pep tra flastret, ha drailhaet !

D'ar zul ar beure, 'pen an de,
Madalen a oa 'tal ar be,
Be hou Zalver, he Mestr karet,
He c'halon meurbet glac'haret !

« Perak e ouelet evelse ? »
C'houlennas outi an Ele ;
— « Abalamour n'ouvean ket
« Pélec'h 'deus ma Zalver laket ! »

Aboue, ouz Madalen henvel,
Goude bean gwelet mervel,
Nag a den an eus lavaret,
Eu eur gomz eus e dud karet :

« Tremenet int, ha me, breman,
Chomet ma unan-penn aman,
N'hellan kas diwar ma spered
Sonj ar re am eus er vered !

Pelec'h eman 'ta o ine,
Ha bean maint dirak Doue ? »
Glac'har hag anken war eun dro !...
Bevan evelse 'zo garo !

Ineo kristen, chilaouet,
Mouez eur Vam hag a gar meurbet ;
Mouez an Iliz 'tar d'imp sellet
Etrezek daou lec'h binniget.

Pa bouez eur zamm war ho kalon,
En koun tad, mam, breur pe vignon,
Tôlet eur zell war ar C'halvar,
Hag eur zell-all 'trezek ar Gloar.

Ha ma 'peus ineo er boan,
O foanio kri 'c'hellet distañ ;
Ma 'peus en gwirione kalon,
O ! n'ankouezet ket hoc'h Anaon !

G. D.

Divunadellou

I

Pe seurt kem a zo etre eul laer hag eur c'he-
mener ?

II

Perak ar c'henta eus eur vanden vugale n'eo ket
peuruian ar bravan ?

III

Pe seurt tud eo ar re a fell d'ezo kaout atao
rezon ?

IV

Pe seurt kem 'zo etre eur prinz pinvidik hag
eun istr ?

V

Pehini eo ar vihanan Republik a zo er bed-
holl ?

J. C.

HA BEA EZ EUS DIAOULO ?

En amser goz, ar filozofed evel Platon, Plu-
tark, Porfir, meur a skrivagner pagan, an dud

brudet dre o deskadurez, a zisklerie, a grede e oa
drouk-sperejou, diaoulou.

Er c'hantoroù diweza, ar filozofed Lok, Klark,
Leibnitz, Newton o deus bet ar memes kreden hag
o deus roet da glevet ar memes kelennadurez. An
Tadou santel eus an Iliz o deus prezeget ha mer-
ket en o skridou ar memes kreden. Ar Skriturioù-
Zakr o-unan a verk sklear ez eus drouk-sperejou,
diaoulou : eun artikl eo zoken eus ar gwir feiz red
evit beza salvet. Evit gellout nac'h kement-man e
ve red displega n'ouzon ket pet mil dra ha n'o
deus gallet digouezout, dont da veza, nemet dre
drouk-sperejou.

KATOLI.

E GWERZ :

An Teir C'had hag ar Mevel laer

daou bez-c'hoari farsus dastumet gant KLAODA
AR PRAT.

Peziou koant ha mat tre da vean c'hoariet gant
pôtred yaouank ar patronajoù.

Al levrig : pevar gwenneg.

A bep tu e teu d'imp gourc'hemennou evit al
levrig-ze a zo lennet betek e Bro-Wened. Setu
aman ar pez a skriv d'imp eul lennerezh vat a
Wened : « E tan a zigemer ar Mevel laer hag an
Teir c'had. Brau ! Eutren ar Prat, hag inour
d'oh ! » Tregeriz ha Leoniz, ne chomomp ket
warlerc'h ha lennomp, ni ivez, oberou hon mignon
mad Klaoda. Dudi a zo a-leis ouz o lenn hag,
ouspen dudi, kelen ha skouer-vad !

DINDAN AR WASG :

Peziou neve gant DIR-NA-DOR

POTR E VRAGOÙ BERR HA TOG JANI

(ar pez-man bet d'ean an eil priz en Plougastel).

Peziou gret, an hini kentan, evit pôtrez yaouank
pe krennarded, an eil evit merc'hedigou.

Al levrig : 5 gwenneg.

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz
asuret o ilizou aboue lezen an Dispart.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar Sa-
voyarde, er penn anei kristenien vat, hag a ra
diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had,
hag en tu-hont da ze a ra pacan eiz gwenneg dre
vil nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnonezou-all, hag a
ro eul loden eus he gounidoù da zikour ar veleien
ezommek.

Skrivan da E. AR MOAL (Dir na Dor), a labour
en tu breton an eskopti evit ar Savoyarde.

Ar Savoyarde a ra, ouспен, kement assurans a zo,
assurans tan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Ar Savoyarde a glask tud 'vit ober assuransou
en arondisamant Gwengamp. Skrivan da E. AR
Moal. Gounid mata a vo.

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gomp-
agnonez vrudet : Etablissement agricole et com-
mercial des vins de Bordeaux.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiu

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

RENEREDEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMHANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FORNEZ AN GEIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.
FORNEZ AN GEIZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve tref'het,
Ouspenn ar Yez, e ve Pec'he d'
MILIZ.

ALI

Bet hon deus. — re divizat. — eur pennad
shrid eus ar braoan, eus Plounerin. Ar zun a
deu e vo kavet aman.

ALUZENNOU DAJ "GROAZ AR VRETONED"

Eur misioner eus an Afrik. 4 real.
Eur mignon a Gemper. 4 real.

EUR C'HELO MAD

O tremen dre Voutronlez an de-all hon deus
bet ar blijadur da welet hon mignon Ar Yeodet
hag hon deus goulnnet digantan pegoulz e vije
moulet *Bleunioù Yaouankiz*.

— « Ma Doue, emezan, mont e ra war-raok ; ma
gred e c'hallin kas anezan d'am rakprenerien an
deioù kentan a viz kerdu, en giz *daerou mad*...
Ha neuze, mar karet teurel eun tol-lagad war ar
vicherourien e welfet penôs e kerz mat an treo... »

Gant kalz a blijadur e welomp neuze al levr
hanter-voulet, folen vras du-man, folen-vras du-
hont ; herve gwelet e vo koant ha dereat.

Betek breman ne gredomp ket e ve eul levr bre-
zonek moulet kaeroe'h. Mar deo kaer ar moulle-
rez, petra laret eus ar peziou a zo ennan ? D'ar
pevar lamm hon deus furchet al levr penù-da-
benn hag e c'hallomp laret e vo *Bleunioù Yaou-
ankiz*, en gwirione, levr an holl, dre uhelder e
soujou, doare dispar e zoniou ha dreist-holl dre
ar spered kristen ha breizad war an dro, a very
ennan hep paouez eus an eil penn d'egile.

Pelec'h eman an den oajet ha diaze ha na garfe
ket lenn *Kaerder an noz*, *Eun devez a blijadur*,
Mouez eun Delen, *Ar vleven gentan* hag all !

Pelec'h eman an den yaouank pôtr ha plac'h,
ha na denerezo, na drido e galon o lenn : *Hun-
vredigez*, *Spenn-gwenn*, *Marigonih*, *Avel ar
Yaouankiz*, *Tina*, *Mili*, hag all, kenlies ha kenlies
a zoniou dudrus, bet gouzanvet pe groet an darn-
vuian anê diwar eun digare gwirion, eun digare
bevel. Kement den yaouank a gato lenn *Bleunioù
Yaouankiz*, rak evit ar yaouankiz ez eo groet ar
muian.

Pelec'h eman ar gwit Vreizad ha na vervo e wad
o lenn : *Bez soudard*, *o Breizad*, *Ar soudard
kristen*, *Malloz an Anaon*, *Ar votadeg* ha kant
ha kant tra all !

Bleunioù Yaouankiz an eus peadra da zidui an
holl ; e lec'h a zo merket en pep tiegez breton.

Herve lavar Ar Yeodet, n'en deus nemed eun
doan : doan ne vefe ket tennet trawaic'h... Gwaz
a vo ze, emezan, evit an dilerc'herien... Evel
just, ar re o deus roet o hano a vo servijet da gen-
tan !

Bezan 'zo en *Bleunioù Yaouankiz* eur bern
peziou ha n'int bet biskoaz moulet. Herve hon
sonj ez int bravoc'h ha kaeroe'h eget ar re-all.

C'hoantet hon deus bet kavout unan bennak da
c'hortoz al levr, mes Ar Yeodet na c'houlle ket,
abalamour d'e rakprenerien o devo muioe'h a
blijadur o kavout ane el levr. Aotreet an eus
ac'hanomp koulskoude da gemer e ginnig, a
voullomp amanpelloc'h. Hon lennerien a welo

dre ar c'hinnig e c'hall *Bleunioù Yaouankiz* be-
zan lennet en pep ti.

Araok kwitât hon deus laret d'hon mignon e oa
gortozet e levr gant kalz a hast hag e oa krog
zoken e rakprenerien da glem : « Lavaret d'e, eme-
zan, kemer o blijadur, ha da c'hortoz evan eur
bannaoc'h d'am yec'hed ! »

Ankouas a reomp c'hoaz laret eo al levr skeu-
dennet kaer gant Jos Parker, eus Fumesnan. En-
tousez ar skeudennou hon deus gwelet *Ar Barz-
koz*, *Tour Bonvel*, *Ti ar paour*, hag all.

Eu eur gir al levr a vo, hep fazi, bravan levr
brezonek a oufed da gavout.

ABOSTOLED AR VRO

Gourdrouzet ac'hanon, mar be red

An diouziiekan hag an diotan en peb doare eus
mignoned *Kroaz ar Vretoned*, goude locenni gant
ma c'henvroiz diwar ar meaz an oll reuzioù, an
oll boanioù eus o stad, goude huanadi pell amzar,
didrous evel eun oanig en kreiz safar eur foar-
vraz, sonnig eveltan, e oan deut skwiz o truanti ;
mes skwisoc'h c'hoaz o welet ar bobl o vont war
fallaat, en hano Doue ha Breiz, hon mamm-Vro,
em eus leusket eur griaden lenn a drue da c'houl
sikour d'ar bobl-ze e klasker diframma diouz e
galon peb gwellañ a zo er bed : doujanz ha ka-
rante Doue kouz hag ar resped evit yez ha gizioù
fur hon c'hendadou.

Pa grogan em fluennig diouziiek, da skriva eur
pennad dister bennak, ne chilaonan nemet mouez
ar galon vreizad a zo em c'hreiz ; rak c'hoant am
eus ma vezo anaveat er bobl Vreton evel m'eina
an de a hirie, na gwelloc'h na falloc'h.

Pa digoue d'in, goude 'n em veskan gant an dud
a renk izel, dizoloï eun dra bennak a bonez, eun
droug bennak o paran lól ar maro war bep tra
vertuos, neuze a savan ma mouezig raouliet da
c'houlenn ma vo eveseet piz ouz ar pez a zo pen-
kaoz d'ar sort reuzioù.

Evelse 'zo bet c'hoarveet ganin arôk skrivan ar
pennad « Abostoled ar Vro. » Seblantout a re d'in
dizoloï eur walen vras en-touez ar Vretoned, me
lavar eur c'hlenved stagus a deu bemde muioe'h
fuloret, a gerz dre an ér war hekleo ar zoniou
gallek ha budur, a disken dre an dioukouarn
(diou zorig digor d'an droug ha d'ar vad) en iue
ha kalon pep Breton hag ar c'hlenved-ze a voug
en e galon mouez ar skiant vat ha sklerder ar fe.

An hent kemeret gant an diskredioù da dizout
betek iue ha kalon an den eo an dioukouarn ; rak
se, an dioukouarn a vo ive an hent a vo red
kemer evit tizout betek enebour ar furnez hag evel
ma eo ar zoniou hag ar skridou ar beuvioù a zo
bet impliet da esaat lazant pep tra onest, fur ha
kristien, ar memez beuvioù a vo red da implian
evit 'n em zifen.

Pa eo klav eur bugel, ar medesin, goude ana-
vet ar c'hlenved, alies a griz e diouksoa rak ar
bugel n'eo ket ez hen lakaat da eva drogach ; n'eus
forz, ar vann na goll ket kalon ; kemer a ra leaz,
pe sukr, pe eul lipouerez bennak, lakaat a ra
ennan al louzou divlas ha c'houero ; ken kiinnig a
ra d'he bugel na oar netra ; ar bugel a gemer al
louzou ha chetu hen adare o kemer e nerz hag e
gened an evoa kollet.

Bugale Breiz Izel a zo gwall-glanv ; koulskoude, e

chom gaute c'hoaz eun donezon gaer : ar c'hanan.
Ac'hanla, an drouk-spered hag e vevelien o deus
ijin a-walc'h d'implian an dra-ze da rei louzou
fall d'ar Breton evit hen ampoezoni, siouaz d'ezan !

Daoust hag-en ne vije ket eun dra vad ive, da
nep a glask silvidigez ar Vro, ober eus ar c'hanan
ar memes impli a rer eus al leaz dous, eus ar sukr
pe eus al lipouerezou-all, da ginnig d'ar Breton
ive al louzou mad a viro outan da vervel ?...

Pa vez klav eur rumm eus bugale ar memes
tiegez, ar re-all a vez tost ar c'hienved d'e. Mes
chom a ra gaute c'hoaz eun tammig mui a nerz
hag e lakout o foan da herzel o breudeur da vervel.
Evelse ema kont gant ar Vretoned. Darn a zo
gwall-glanv, darn-all nebeutoc'h, mes ze n'eo ket
laret e tle ar re nebeuta klav dilezel o breudeur-
all abalamour int prest da vervel. Nan, ar c'hon-
trol o deus d'ober, prienti louzou-mad d'o breu-
deur ezomnek, hag, hep dale, kemer war an dro
peadra da 'n em yac'hat int-ive o-unan.

Digarezit ac'hanon, barzed ha lennerien ger ;
krog e oan adarre gant eur gentel didalvoudek
marteze, mes eur breuven muioe'h a roan d'ac'h
penôs n'am eus ket disket klask troidellou da
disklerian ar pez a dremen em spered. Kwit a
droidellou eta, e c'houlennan ma vo savet eur
Vreuziez « Abostoled ar Vro. »

Na 'm eus ket sellet ouz an diesder a vo o sevel
pe o esaat sevel eur Vreuziez evelse. Gout a ran
eo poanous, dreist-oll er c'hantved-man ; laret em
eus berr ha berr : Ra vo savet ! ar pez a ro da
intent 'zo ezom, tremen ezom da zavel eur Vre-
uziez da gas betek korn an oaled eun draig bennak
a vad evit ar Vretoned.

Pedi start a ran an holl varzed kristen, an holl
dud o deus interest evit Doue ha Breiz, da respont
d'am goulenn, pep-hini herve e vennoz.

N'eus forz pe am mo lizerou meulodius pe
gourdrouzou ; holl e refont d'in ar memez plija-
dur, rak kement-se, mar ne vefe ket gallet sevel
Breuziez ebet, a vezo talvoudek d'an holl, dre ma
vezo anaveat gwelloc'h a ze Breiz hag he broiou, ha
marteze unan pe unan a gavo eun dra bennak
gwelloc'h evidon da ginnig d'ar Vretoned.

Oh ! hag e vefen eürus, mar klevfen lavaret
penôs an eve unan bennak kavet ar rouden vad da
ziskan en kalon ar Bobl !

Oh nan ! ne grogfe ket ar wariz em c'halon,
o klevet unan bennak gouziiekoc'h ha nerzusoc'h
o c'holoï ma mouezig gant e hini.

Ra laro eta pep-hini e zoni evel ma 'n eus laret
dija *Per an Huerou* ; ar barz gouziiek Klaoda-
Pluenzic an eus respontet ive, mes o veza kavet
re da laret c'hoaz, n'hellan ket lakat e respont
hirie.

Trugare d'eze ha d'ar re-all c'hoaz o deus roet
d'in o aliou evel *Abherve*.

Dastum a rin an holl lizerou evel eun tensor
eus pehini vo gallet kemer ar pep gwella evit mad
pep-hini ac'hanomp.

Dreist oll, e pedan an nep a skrivo, da respont
skler, ha, hep aon, d'am dislaret, mar be red.

Chetu, o ma Doue, 'r pez dremen em spered,
C'houi a oar ha mad int, ha ma na oaran ket,
Evit ho kloar, evit ma bro eo e skrivan,
Ra vo gret ho polante santel da gentan !

L. NICOLAS (*Pen-Breton*),
Sant-Mikel-Gromwel.



AR VRO DA GENTAN !

Eur gazeten neve a zo zavet en Pariz evit Bretoned Pariz. En galleg eo skrivet. Gret a ve anei « Le Breton de Paris ». Netra a welloc'h 'vit eur gazeten vât da unani sperejou ar Vretoned di-voet.

Ar « Breton de Paris » an eus eun dalvoudegez ouспен, er mare-man. Rei ra d'imp da anaveout pesort stumm spere-l a den da vean hini ar Vretoned o chom hag o labourat er gêr-veur gall. Setu aman respont unan eus Bretoned Pariz, (an otro Lann a ve gret anean, emmenuzer eus e vicher), d'eur goulen gret er gazeten, diwarben an divroadegez. Ar gazeten a c'houlen :

Pe eun dra vât pe eun dra fall eo kwitât e vro ? Ma 'z eo eun dra fall, penôs enebi outan ? Ma 'z eo eun dra red, daoust e ve fall, penôs lakat an droug da dalvezout eur vad bennak ?

An otro Lann a respont, d'e dro, goude kalz a re-all, ha setu aman, en nebeut giriou, petra lar : Eun dra red eo kwitât e vro.

Er mare-man an dud a glask o ézantant mui evit gwech-all, hag anez kwitât o bro, n'he c'havfount ket.

Gwellan lec'h a zo 'vit 'n em dennen e berr amzer eo Pariz, ma kaver sikour ha skoazel, en eur arruout, abeurz ar Vretoned pinvidik o chom eno.

Neuze 'ta, eo red : da gentan, pourvei sikouriou mat d'ar Vretoned a deu da Bariz :

D'an eil, ne fell ket digas da Vretoned Paris sonj eus o bro, rak kement-se na ra nemet rei d'e drouk-hirnez, hag o dinerzan ;

D'an drede, kazeten « Le Breton de Paris » na dle ket zoursial a botitik, nag a filozofi, nag a relijion, mes rei sikour d'an holl Vretoned da c'hounid eun tam arc'hant, pe « mieux-être », gwez d'an otro Lann.

Setu aze, 'vel pa lavarfen, an dumen eus respont an otro Lann d'ar « Breton de Paris. »

Me gred d'in e teu al lizer-man da zisklerian, evel eur mezellour, stum spered eul loden vras a Vretoned koulz eus Paris 'vel eus a lec'h-all. Eur skriyagner brudet a Vreiz, an otro Goffic, a skriv eu penn eul lev'r neve, *l'Ame bretonne*, 'zo breman eur c'hrog tenn en kalon ar Breton etre diou lezen, al lezen goz, hini ar relijion hag ar politik gwenn, hag al lezen neve hini ar politik ru ; mes ze n'e ket gwir mat ; pez a glasker, da gentan, eo bevan dizoursian ma heller, dre 'n em vagan ha 'n em wiskan gwelloc'h 'vit ma vije gret ketek hen. Ma 'n eus ar gir « Progrès » ar gir « Republik » hag ar gir « Anticlérical », eun dalvoudegez bennak en Breiz, eo hounnez eo. « Progrès », « Republik », Anticléricalisme » a zo memes tra 'vel gounid e vue dizoursi ha tanva ar muian ma vo gallet a ezamanchou hag a blijaduriou.

Dre ne glasker nemet ézantant ha plijadur, ne zanter ive ezom ebet da 'n em vodan ha da 'n em zikour nemet 'vit danzen an dra-ze. C'houi 'zo eur Breton pinvidik o chom en Pariz ? Sikouret ac'hannon eta da zont pinvik evelloc'h. Ma ho peus, a hendall, anaoudegez war ar relijion, war ar Vro goz Breiz-Izel, war ar politik, miret e vidoc'h hoc'h anaoudegez ; ne glaskan ganac'h kelennadurez ha skoazel nemet evit eun dra, 'vit bean pinvidik. Mar savet eur gazeten evidomp-ni, Bretoned, hag a gwita hon bro 'vit lakat hon nerz, hon yaouankiz, hon spered da dalvezout, ne gomzet ket d'imp en ho kazeten eus treo ar Vro ; rak lakat a rafent ac'hannomp da fallgaloni. Lezet a-goste soniou, gwerziou, marvailhou gwraç'h-koz, troet hon c'hein d'hon Bro hag hon daoulagad tresk tosen ar madou hag ar blijadur elec'h e renkomp pignal. Bro, relijion, filozofi, politik, an treo-ze n'int mât nemet da luian an hent warzu ar binvidigez, ar « mieux-être ». Eun dra hepen a glaskemp en eur gwitât hon bro : madou. N'houllomp ket hadkavout en Pariz ar pez hon deus lezet war hon lec'h, bro, politik, relijion hag all ; kalon ar poblou a zo hirie gant an arc'hant ha nan gant

treo-all. Gret d'imp gounid arc'hant ; gret d'imp « arruout. »

Neuze 'ta, ar vro, ar relijion, n'int ket c'hoaz, peurvuian, treo kazus evit ar Vretoned ; mes ar greden-man o deus, ne dalvezont netra 'vit o finvidikat. Eno 'man o dalc'h ; eno 'man o si. 'Vit gallout 'n em « debronilha », 'vel ma lavaront, 'vit bean skanvoc'h da gerzet, e kredont eo red dizamman diouz o Bro ha dioaz o relijion. Intent fall a reont petra eo ar Vro, petra eo ar Relijion ; pa veint intentet mat, lans eo a roont, ha n'e ket lakat skoilh ; eun nerz 'n hini int, ha n'e ket eur zamm.

Klask madou n'e ket eun dra fall, pell ac'hane ; mes klask madou a-ziaez eus ar vro, an dra-ze 'zo aliesoc'h fall evit mât. Forz na pa ve paour ma bro, nemet e vin-me pinvik ! Setu eno petra lar en o c'halon al loden vras eus ar Vretoned a gwita ar gêr.

Ne glaskont ket goût hag-en n'hallfent ket, en eur chom er vro, dastum peadra, kreski evelse mad ar vro gant o hini o unan. Nan, en Pariz e c'honeer *muioç'h* ha *primoc'h*. Da laret eo : *Me da gentan, ma Bro goude !* Dont a-walc'h a rent c'hoaz da chom d'ar vro, an nep a deu a-benn da zeri eun tammig leve ; mes daoust pesort gounid he deus ar Vro diouz seurt Bretoned ? Digas a reont gante yez ha gizioù Pariz, ken ma vije well d'e alies bean chomet 'lec'h e cant.

Ez-eün da reolen an otro Lann, eo red eta lakat eun all dishenvel. Setu hi aman berr ha berr :

Ar Vro da gentan !

Neuze eta, chom er Vro, hag ober diouz gounid er Vro ar pez a zanter 'zo ezom 'vit bevan éz. Evelse rer, pa glasker mad ar Vro 'rôk e hini e-unan. Ha mar man hon fri war ar gleud ! Rei ket, pa lako ar Vretoned a ya da Bariz kement a boan da 'n em glevet ha da 'n em denn er Vro, 'vel ma lakont da 'n em denn en Pariz. Elec'h zikour o c'henvroiz azommek da 'n em denn en Pariz, ar Vretoned pinvidik a zo eno a diefe o zikour da 'n em denn en o Bro.

Hag an otrone o chom en Breiz ? N'e ket eno e kavfent impli d'o feadra, o lakat o arc'hant, 'vel pa lavarfen, da demzi ha da druat o Bro ? Mar tec'h he bugale digant Breiz, eo dre m'eo treut ha kasti ; mes perak eo treut ha kasti ?

Abalamour ma tec'h he bugale diganti, koulz krokanted 'vel peorien. Ar grotanted a gas o arc'hant ermez ar Vro ; hag ar beorien a gas o bugale. Paour ha pinvik, red vije eta 'n em glevet da *lakat mad Breiz da gentan*. Neuze, ne glevfemp ken tud a spered hag a galon evel an otro Lann o komz evel ma komzont, rak neuze mad pep-hini a vije ive mad ar Vro, ha mad ar Vro mad pep-hini.

Mes amañ, ar pinvik eo d'ean ober ar gammed kentan, rak ézetoc'h eo d'ean miret e arc'hant er vro da laboural. 'vit n'eo d'ar paour miret e vugale. Esperanz a zo 'benn eun amzer da zont, rak dont a ra bemde hiniennou mat a dud da lakat o zonz gant ar Vro. Ar c'hentañ 'r gwellan, rak an divroadegez a zo zin a wall-glenved hag a denn ganti kalz a glenvejou-all. *Eur Breton Kiz Breiz.*

HERDER AR C'HIRRI DRE DAN

Yan an Huvreer. — Ya, me zo bet eur wech e karr-dre-dan an aotrou Pen-avel hag e rede ken buhan ken e oa an holl draou mesk-ha-mesk, evel eun huve, dirak ma daoulagad, hag e seblante zoken ar postou-orjalen war ribl an hent stok-bastok evel barinier en eur gloued.

Pipi ar Brabanser. — Ha me 'ta, e karr dre dan an aotrou Laz-dud, e oa ar mein kilometrou dirak ma daoulagad kichen-ha-kichen evel ar mein-be er vered.

Jakez an Hostiz. — Ha me, pôtre, pa veachan em c'harr-dre-dan etre Gwengamp ha Montroulez, e welan kaol ma liorz, saout o peuri war ribl an hent, ha douriou stank Beaj-vad Ploumerin, en eul lajad, ken e vezont mesk-ha-mesk dirak ma daoulagad, gwez d'an huveer, hag e reont dirazoun 'vel eur podad zouben : bouilhonz, kaol, kig bevin ha tout !

BLEUN-BERED !

E-tal eur be, warnan traez gwen, A-us d'ean eun ivinen, Eur plac'h vihan, striz ha kasti, 'Oa daoulinet evit pedi !

Dleont a re, emzivadez, Gonit he bara 'vel mitez, Ha kimiadi, evit-se, Eus he farouzig, hepdale !

Pa 'oe ganti gret he feden, Laket sin ar groaz 'n he c'herc'hen, Ar plac'h a den en he spered Kemer bleunioù eus ar vered !

Ha 'n eur asten he dornig gwen, E troc'h hag e lak 'n he barlen Bleun diwar be he mam garet, Bleun a oa neve-diwanet !

He daoulagad leun a daero, 'Oa o paouez distrei en dro, Pa 'wel eur beleg 'n he c'hichen, A gomzas outi evel-hen :

— « Ma flac'h vihan, petra 'douget En ho parlen 'velse kuzet ? »
— « Eun toullad bleun, 'me ar plac'hig, Kuntuilhet ganin, bremaik !

Ret mat 'eo d'in, 'dalek warc'hoaz, 'N eur harouz-all bean, sionaz ; Da vihanan, em o ganin Bleun eus he ma mam, pa bedin ! »

Dirak ar bleun-ze, noz-veure, Me 'rey ma feden da Zoue, Hag e kavo d'in em o c'hoaz, *Tost d'in ma mam... maro... sionaz !*

G. D.

PETRA A WELAS ERWANIG

Kontaden savet da Vugale Vreiz

Erwanig e oa hano eur Breizad bihan a oa bet savet mat gant e gerent er c'hiz koz :

Ar c'hiz koz ar c'hiz gwirion.

Kenta komzou a oe disket d'ezan e oe re sin ar groaz e brezoneg ha ne oa ket bet troet, ez vihanik, war ar galleg evel kel lies a vugel hirio an deiz.

Pa rankas mont d'ar skol e oe graet gwap warnan dre ma komze brezoneg hag ar vestrez, eur c'hallez rok, a laras d'ezan krak ha kren e oa hen eur « sauvage » ha ne felle ket d'ei klevet nemet « français » en he skol.

Erwanig a zistroas en eur ouela da gaout e dad hag heman a laras d'ezan :

« Arabad d'it, va mabig, beza anwazet gant ar pez a teus klevet. Kement-all a glevi c'hoaz meur a wech gant ar C'hallaoued. Laka don ez spered ha dalc'h sonj ez eo eun enor bras evidomp der-c'nel d'eur ouen-dud gwelloc'h ha kosoc'h eget hini ar C'hallaoued ha komz eur yez, ar brezoneg, a oa yez rouane, marc'heien ha sent vras d'eur c'houlz ne oa c'hoaz ar C'hallaoued nemet tud gouez ha paganed. »

Dam-intent ar c'homzou-ze ne rea ken Erwanig hag hen o c'houlen ouz e dad :

— « Tata, lar d'in pelec'h eman o chom ar rouane, ar varc'heien hag ar zent vras-se ? »

— « O, va mabig, a respontas e dad, emaint o veva en eur vro gaer dindan ar menezioù en gortoz donter-maez eun de, pa vo dent ar c'houlz, da adsevel hon bro garet ha d'he adlakat en hec'h enor hag en he splander gwechall. »

Respont e dad a yeas don e spered Erwanig hag eun de ma oa bet lezet en e frankiz da vale, e reas e vennoz da glask bro ar menezioù e lec'h e oa ar rouane, ar varc'heien hag ar zent vras.

Dre hir gerzet ec'h en em gavas e-unan e-kreis eur c'hoaz, skwiz-mar, ma ne oa ken evit mont pelloc'h gant ma oa brevet e gorfig. Eur c'hef koz a oa eno diskaret en e c'hourvez ; golet e oa a douskan (a van, a ginvi) a balenne ive an douar tro-dro. Hag ar c'hoaz a oa ken glas hag ar bleunioù ken koant ! Ha ken dudius ive kan an

evned ! En e gichen eur wazig dour a zave he monezig o c'hoari gant bili he naoz, hag e kane flour an hiboud anezi evel pa vije bet kant ha kant a gleierigou arc'hant o seni er pellder.

Erwanig en em lezas da gouezan war ar gwele touskan hag e vanas kousket sioul, e benn harpet ouz ar c'hef koz diskaret. Evit d'ezan bezan kousket, e oa evel war dihu hag e wele hag e kleve burzudou ar c'hoad ervel arôk.

A greis holl setu e klev trouz hag, o tifoupan eus donderiou ar gwez, e wel eun den war gein eur marc'h. Eun den mentek e oa ha d'ezan eun neuz dispar gant e vleo hag e varo melen, liou bleun al lann, e zilhad ru ha gwer hag ouz korn e glun (e vanden) eur c'hleze, goloet ar ouin anezan a vein skedus. E varc'h a oa gwen evel an erc'h hag e voue a nije war e c'houg, dre ma kerze, evel an eon war gribenn koummou ar mor. Da heul an den-ze e teue tri marc'h-heg-all gwisket damdest eveltan. Unan a oa du e varc'h ; glas ha gell e oa liou kezeg an daou-all.

Neuze an hini kentan a ziskennas a ziwar 'e varc'h hag e taolas ple Erwanig e oa gantan war e benn eur gurunen aour marellet a vein talvoudus. Ru-gwad, gwer, gwen ha glas e oa liou ar mein talvoudus-se.

Steki a reas e zorn ouz skoaz Erwanig o laret : « Pion out ? »

— « Eur Breizad bihan, eme Erwanig, a zo brao gantan ho klevet c'houi ive o komz brezoneg. »

— « Mad, eme an den, ha pe hano out ? »

— « Erwanig, a respontas heman, aonik. »

— « Erwanig, eme ar marc'h-heg, ha karout a rez-te da vro ha da vrezoneg ? »

— « O ya zur, rak e oad o c'hoarzin ouzin er skol hag e laras ma zad : « Na vern ket ! n'eus forz ! Derc'hel a reomp d'eur ouen-dud kosoc'h ha gwelloc'h eget hini ar C'hallaoued hag ar brezoneg a gomzomp e oa yez rouane, marc'heien ha sent vras d'eur c'houiz ne oa ar C'hallaoued nemet gouezidi ha paganed. »

— « Hag a zo gwir, a laras ar marc'h-heg en eur ober eur mousc'hoarz, an teneran a welas Erwanig biskoaz. Ha gallout a rez-te kana d'in eun dra bennak e brezoneg ? »

— « O ya laouen, eme Erwanig, rak meur a ganaouen am eus disket gant ma zad, a zo eun tammig barz anezan, c'houi oar, » hag e kanas :

Breiziz pell diouz a gantre,
N'int ket kollet, ma Bro !
Rak kalon Breizad 'vel an tre,
Zo sur da zont en-dro.

Poz diwezan eur ganaouen a oa bet savet gant e dad da Vreiziz divroet.

— « Mad ! eme ar marc'h-heg ; eur Breizad bihan gwirion out, war ar welan, hag e teul da vezan eun deiz eur Breizad bras. Ha dont a ri gantin ? »

Nec'hlet e oa bet da gentan Erwanig o welet ar marc'h-heg. Breman avat, p'en doa klevet e vouez ken hegarat ha gwelet e vousec'hoarz ken tener, e lavaras d'ezan :

— « Ya, mont a rin, mar kavit mat. »

War ze e stouas ar marc'h-heg hag e savas Erwanig etre e zivrec'h. Lakaat a reas e droad er stleug hag e pignas war e varc'h gwen gant ar bugelig a azezas eas ha kempen war gorbel an dibr, en e raok.

Hag e kerzjont goustad gant ribl ar wazig-dour dre donderiou sioul ar c'hoad, hag ar bugel a estlamme ouz ar vro neve e oa o vont da welet.

(Da heuilh).

KELIHER EUS AR BED-OLL

Nep a dav a asant. — Kaer he devoa bet intañvez eun ofiser e arme Roue an Itali skriva da heman evit goulen digantan kreski he fansion, ne veze graet d'ezhi respont ebet. Neuze ec'h ijinas skriva da verc'hig ar roue. Digemeret e oa al lizer gant ar roue a droas ouz e vevl bras : « Kasit al lizer-man d'ar brinsez yaouank, emezan. » Ar

brinsez, eur bugelig bloaz, a oa kousket mik en he c'havel. Ar mevel a lennas al lizer dirazi, dic'hoarz ha pompus, hag e listroas da gât ar roue. » — « Petra, eme heman, he deus respontet ar brinsez. » — « Netra, eme ar mevel. » — « Gant se, neb a dav a asant, a laras ar roue ; reit he mennad d'ar c'houlennez. »

Brezel ar c'hijer. — Roue pe « sultan » nevez ar Maroc, e tigozeout en e balez Marakech, a gavas anezan leun a legod. Evit diouenna anezo e c'hourc'hennas d'e sujidi pourchas d'ezan nousep mil a giger... hag eur milion en arc'hant ouспен, da voueta ar c'hijer emichans. An Arabed a nac'h plegan d'ar gwiriou-ze ken diskiant hag a ginnig an em zével ouz o roue abalamour d'ar c'hijer.

Paeron ar presidant Fallières kantvloaziad. — An aotrou Gregoire, paeron presidant ar Republik, a zo maro ar zun dremenet d'an oad a gant vloaz en eur gerig eus ar C'hreisteiz hanvet Port-Sainte-Marie. Daoust d'e oad e oa kreuv hag akwit ; sevel a rae bemde da beder eur hag e rae pep sun eun hirt a veaj betek Agen, kerbenn an departamant.

Korsiz na fell ket d'ezo beza gwasket. — Korsiz eo enezidi eun enezen hanvet Kors, en em gav er mor kreisdouarek (Méditerranée e galleg) ez-eun da aochou Marseilh. Brudet int dre hardiziegz ha noblañz o spere ; sonj o deus e oa Napoleon koz eur C'horsad ha ne fell ket d'ezo beza bazyeot ha kabestret. Eun depute o devoa, hanvet Emmanuel Arene, a oa mad kenan d'o difenn ouz kargidi (fonctionnaires) ar gouarnamant. Eur wech maro ar c'hannad-ze setu Clemenceau o klask rei harp d'ar gargidi. Korsiz o deus kaset da Bariz kannadourien dibabet ganto da zifen o gwiriou. Ne fell ket d'ezo bezan gwasket.

« Pipi Gonto » e-touez ar Vorianed. — Setu Pipi Gonto, goude ober e dro-Vreiz, o vont en tu-hont d'ar mor da vro ar Vorianed. Goulennet eo bet e levr dudius digant Dir-Na-Dor gant eun tad o visionn en Dahomey. Ra gaso Pipi Gonto d'ezan, a-unan gant kontadennoù e vam-vro, gwellan mennoziou e genvroiz !

An nijerien. — Heligenta a zo savet etre holl ijienerien ar bed d'ober mekanikou nevez da nijal en ear evel evned.

Daou sort a zo eus ar mekanikou-ze : Darn, skañvoc'h eget an ear, a zav drezo o-unan, henvel ouz eur stouf (pe taf) spoue a vije lakaet en dour, pe gentoc'h ouz eur c'houezigell, rak, e gwirione, eun aerlestr (aérostat pe ballon e galleg) n'eo remmet eur c'houezigell, bet leuniet gant eun aezen skañvoc'h eget an ear, d'ezhi da zével en ear evel ma sav eun c'houezigell ordinal en dour. Mont a ra war rôk dre nerz eur red-viñz henvel a-walc'h ouz eur rod milin-avel. Ar zun diweza eun aerlestr nevez, hanvet Clément-Bayard, eus hano e oberour, a zo bet esaet e Pariz ha dent da vad an tol esa.

Mekanikou-all a zo, pouneroc'h eget an ear ; aerblenou (aeroplanes e galleg) a reer anezo. Wilbur Wright eo hano eun Amerikan a zo deut a-ben ar c'hentan, da nijal ganto. E ker ar Maus eman oc'h ober e dolion-esa. Re-all a leiz a gerz war e roudou.

Ober fals-moneiz gant danvezioù ar gouarnamant. — Eun dra anat eo e vez laeret kalz a draoù digant ar gouarnamant, dreist-oll gant ar vicherourien o labouran en arsenalioù pe er porziou-brezel. Darn eus ar re-ze, ouспен ma laerent kouevr ha metalou all en arsenal Roazon, o devoa kavet an tu da laerezh diwech ar gouarnamant oc'h ober gant ar metalou-ze fals-moneiz. Unan anezo, hanvet Rajet, a zo bet disknihet gant e wreg ha prizonet.

Gwellaat doare-skriva ar galleg. — Ar C'hallaoued a ra gwap ouz Sinalz (Chinois) dre ma 'z eo dies kenan diski ar grouz-Done en o yez. Henvel int ouz an hini a wel ar blouzen e lagad e nesat ha na wel ket an treust en e lagad e-unan. Rak n'eus tra diesoc'h ha diskiantekoc'h eget an doare ma skriver ar galleg. Meur a zen goniziek, en o fenn an Aotrou Ernault, barz ar Gouet, o deus goulennet ma vije reizet an doare-

skriva e gallek, war skouer hini ar brezoneg, ker skler ha ken aes war an dro.

Ar zun diweza ministr an deskadurez en deus diskleriet er Gambre e oa o prienti eur stern-lezen evit lezel, da vihana, war ar poent-se, muioc'h a frankiz gant ar vistri hag ar skolaerien, n'eus evito nemet torr-penn ha koll-amzer o studia doare-skriva ar gallek, ken diskiant ha rouestlet ma 'z eo !

KELIHER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

KERNE. — Eul laer. — Diwallet ouz al laeron ! Gwechall ne vijent kavet nemet er c'hoajou, gante fuzuilhou ha sabrinjer. Hirie e teuont da vale 'vel an dud a feson, ha gante, elec'h fuzuilhou, lunedou, n'e ket war o fri, mes en eur zac'h, da werzan.

An de-all, eul laer evelse, marc'hadour lunedou, emean, a digouas en eur presbitor eus Kerne hag a c'houllas an otro person. An otro person na oa ket er ger. Setu al laer, pa ne oa ket 'vit tapout ar person, hag o kemer e du war ar vatez.

— Me, emean, a zo marc'hadour lunedeier hag a lak betek ar re dall da welet skler.

Ma ne laras ket ze, eun dra bennak evelse a deuas gantan, da vihana, rak ar vatez a brenas eul lunedou... pemp skoed. Ne oa ket marc'hadmat an treo. Hag ar marc'hadour en e dro.

Gwasan reas, e oe dizrei, 'vit hadtanva ar zouben an eyoa kavet mat ar wech kentan. Mes allas, souben ar vatez ha hini ar person na oant ket ar memes hini. Hini ar person a oe kalz muioc'h pebret.

An de-se oa eta ar person er ger.

— Otro person, setu aman lunedeier hag a ra d'an dud dall gwelet.

— Ya, eme an otro person, ha d'al laeron bean tapet... Ma den mat, emean, ma ne rentet ket d'in war an eur ar pemp skoed pou laeret digant ma matez gant ho lunedou daou wenneg, me ya d'ober gervel ar m'ér hag ar jendarmed !

Al laer a renkas rest'ol, renti ar pemp skoed, brao ; mes et eo pelloc'h da glask pakan reo-all. Tolet ple ouz al laer !

PEURIT-AR-ROCH. — Medalen a enor. — Ar martolod Henry hag a oa bet gwall-dizet war al *Latouche-Treville*, an eus bet eur vedalen a enor digant ar gouarnamant.

PLOUHA. — Dantet gant eul louarn kounnaret. — An aotrou Mahe, a Blouha, en doa bet e donezon eul louarn glas eus an Island. Ar sort lenn a zo brudet evit o bleo flour a dalv d'ober foulennou d'an itronezed. Heman a gounnaras en eul töl hag a dantas breur an aotrou Mahe, en deus ranket mont da di Pasteur e Pariz.

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Dispartii.

Ar re-ze a rajae mat n'eun asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra peaan eiz gwenneg dre vil nebetoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro en loden eus he gounidon da zikour ar veleien ezommek.

Skrivan da E. AR MOAL (Dir na Dor), a labour en tu breton an eskopti evit ar *Savoyarde*.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement assurans a zo, assurans tan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou en arondisamant Gwengamp. Skrivan da E. Ar Moal. Gouuid mat a vo.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Setu serret gant Prat dor hon goueliou. Breman, nemet Plouneve a arrou c'hoaz, marteze, da viz kerdu, n'eus ken nemet danzen adarre ar goueliou benn ar bla deu, dastum gwenneien, levriou brezonek ha lodennoù 'vit tombola.

An treo ze holl a vo digemeret gant joa en bureo *Kroaz ar Vretoned*, ha laket a goste benn miz mae. Rak da vla, mar be bolante Doue, e vo urzet ha kaeraet c'hoaz an treo. Setu aman, adalek breman hepken, ar parouziou o deus goueliou da gât benn kentan hanv :

Kervaria ; Ploubër ; Pleuveur-Bodou ; Prat ; Trégom ; Plijidi ha Carnoet.

Beau 'zo c'hoaz kalz a barouziou-all ha na daptent ket dek bugel er *Vreuriez*, mes gallout a rafent ober, hep poan, da vihanan, Plouagor, 4 ; Lanviliu, 6 ; Sant-Agathon, 3 ; Lomikel, 5.

Ken lies parouz hag he deve dek bugel er *Vreuriez* he deve eur gouel ar bla da gât, prijoñ ha « tombola » hag eur pez-c'hoari, adalek ar bla deu.

Neuze 'ta, Prat, disul tremenet eiz de, a glozas ar goueliou gant enor. Eur blijadur, eun dudi eo mont d'ar parouziou 'lec'h ma kaver kement a harp, kement a zikour 'vel en Prat. Ni, etrezomp, pôtrede *Breuriez ar Brezoneg*, n'eomp da barouz ebet hep kaout, da vihanan, asant ar pastor hag ar veleien. Mes en Prat, e kavomp oupen asant ; sikour ha skozael a gavomp ive abeurz ar veleien, kement ken ne chom ganimp da zastum nemet ar freuz, hag ar boan hag al labour a ve evite.

Disul ar beure, da eiz eur hanter, eun tregont bennak a vugale a oa diredet da di al leanezed koz evit kemer lod el lennadeg, neubeut a botred, mes kalz a verc'hed. An otro Gelard an eus desket d'e kanaan, ha dre eur bater hag eur zôn e tigor ar skol. Sôñ Ma botou koat a zo brao tre kanet evelse holl unanet mat, gant merc'hedigou sklêr ha just o mouez. War al lenn n'e ket, marteze, ken krenv pep-hini 'vel war ar c'hân ; ha koulskoude, bean 'zo etouez ar vugale, pôtrede ha merc'hed, pevar pe bemp hag a lenn brezoneg 'vel eur person. An otro person oa o klevet ha n'am distlaro ket.

Da der eur, e tigor ar gouel, ha raktal an otro Floc'h hag an otro Allain a grog da werzan bilhejou « tombola ». Sonet ar c'hloc'h, an dud a dosta, hag ar zal a deu da vean leun-kouch, daoust pegen bras eo. Betek eus Trézélan e weler pôtrede yzouank, gant an otro Bris, o ferson. Ar vugale a zo er penn kentan, 'vel just, p'eo gwir evite eo grêt ar gouel, hag a gân adarre o zoniou desket d'e 'vel o fater gant an otro Gelard.

Kalz a vammou a oa stad ennê o klevet pegen brao e kânas o merc'hed *Ma botou koat, Koush Breiz-Izel, Bro goz ma zadou.*

Ar Yeodet a bigu war ar skaou, evel ma ra pep konter mat, evit komz eus a Vreiz hag eus ar Brezoneg. Derc'hel start d'ar brezoneg, 'zo ive miret ar fe, rak 'n em derc'hel a reont dre eur skoulm kuz, eur skoulm gret pevarzek kant vla 'so gant hon Zadou kentan, sent ha prinsed Breiz, ha binnet gant Doue. Ar Yeodet a gav bepred mouez ha nerz da gomz a-du gant ar Vro hag ar Wirione ; tud a gav ive bepred da chileo anean ha da strakan d'ean o daouarn. Petra 'zo c'hoaz da vean ! Ar prijout eme ar re vihan. An « tombola ! » eme ar re vras. Bihan ha bras a zo pleet gante raktal, ha goude ar prijou, — roet aman disul, — e teu an « tombola ». An Otro hag an Itron Launay n'o devoa ket ankouaet Prat ; koulskoude, pemzek de arôk, o devoa roet eur gouel kaer en o zi, en Peurit, ha kemeret war o chont an holl dispignou ; mes e tu-hont ma plij d'e kalz *Breuriez ar Brezoneg*, tud Prat a blij d'e ive.

Lavaret e vo bet d'e trugare lies a wech dre ma 'ch e ermeaz an treo talvoudus o devoa roet, dilhad ha pep seurt. Mes trugare hon deus ive da lavaret d'an dud vadelezes eus Prat, pevar pe bemp ane, hag o devoa heuilhet skouer an otro

Launay ha roet meur a dra a briz evit kaerat an « tombola ». Trugare, oupen, d'al leanez vat a zigor bep bla he zi da *Vreuriez ar Brezoneg*. Mes na 'm e ket a fin, mar renken trugarekât kement hini an eus diskouet bolante vat da *Vreuriez ar Brezoneg*, rak red vije laret bennoz Doue da gement hini a zo bet er gouel.

Breman, ne glaskomp nemet eun dra ; e chomo an holl vugale war roll *Breuriez ar Brezoneg*, ma krêsko c'hoaz an niver ane, ha ma vo, da vla, eur pez-c'hoari pe daou, evit ma tiredo an de-se da Brat, ar vro tro-dro.

DIR-NA-DOR.

KINNIG

« *Bleunioù Yaouankiz* »

War don : An Hollaika.

Kutuilhet ganin ma *Bleunioù*, na petra d'ober gantê ? N'hallan ket, hep bezan digar, n'hallan ket miret anê : Ar pez 'zo en tu-hont da red a zo dleet d'ar bewien, Diredet holl, o Bretoned, deut da glask heb a vleuen !

Ma *Bleunioù* a zo kutuilhet dre hent-treuz ar vuez, Gouzout kaer a ran n'o deus ket nemeur a dalvouddegez ; Mes roet d'ez, koulskoude, roet digemer gwirion, Ar Barz a ginnig anê d'ac'h o c'hinnig a greiz kalon.

O c'hinnig a ran da gentan ha gant doujanz da Zoue ; Ma 'z oun ganet en Arvorik, d'Ezan mil gwech trugare ! N'ankouan ket e Yam zantel, hon Man ar Werchez Vari, Ra vefont en Breiz da viken meulet, karet en pep ti !

Beldien ger, tud a spered, gwir noblansou koz hon Bro. D'am *Bleunioù* tener, tener, digret ho torojo ; Chilaouet o galv truzeris, int a laro d'ho kalon : — « Dalc'hit, dalc'hit d'ar Brezoneg, mar karit c'hoaz ar Breton »

Tud karet diwar ar maeziou, c'houi, labourerien douar, An darnvuian eus ma *Bleunioù* a ze d'ac'h-hu, c'houi hen goar, Eveldoe'h em eus bet ive redet roz ha laneier. Ha ma *Bleunioù* — hen goût a ret — eo *Bleunioù* ho parkeier...

Klaskerien-vara, tud izel ; micherourien, tud ha boan. Kavout a refet em *Bleunioù* evidoc'h meur a ziskân : Eur bannac'hig tan en oaled a ra vad en-treiz ar goanv, Eur han-heol a-dreuz d'ar prenest a ro kennezh d'an den klanv !

Yaouankizou ma Breiz-Izel, yaouankizou evurus, Dastomet buhan ma *Bleunioù* : evidoc'h int niverus ; Kaset ganac'h a vrizjou, deut goude c'hoaz war ho liz, Kanet dre-holl, dre-holl kanet... Beh' d'ar *Bleunioù Yaouankiz* !

Kenverdeur, leun a garante, Barzed dispont Breiz-Vihan, Deverout an eur diweran a ginnig d'ac'h freuz e boan ; Evit e lod hen a zigas da di Breiz e vaen dister, Ra vo heuilhet e skouer gant kalz, ma savomp eur c'bastell kaer.

Tarnijet eta, ma *Bleunioù*, tarnijet a-us da Vreiz, Lakel en kalon pep Breizad c'houez vad, levezet a-leiz ! Ba zeuio mihién an Arvor etrezê d'en em zikour, Sed ar pez a choulén hepken diganae'h hok' oberour.

Ha mar tigouefe d'ac'h, *Bleunioù*, ober droug d'an disteran, Fedel-han d'am digareze ; n'eus den didech er bed-man ; Oh ! pedet-ban, en han Doue, pa glevet e via maro, Da skuilh war ma be eur beden en gix *Bleunioù*...

AR YEODET.

DOUE HAG AR VRO

Eun nebeut komzou lavaret gant eur filosof eus hon amzer, hanvet Jul Simon, o deus bet kalz a hekleo en hor bro eun nebeudig-so. Hema, goude beza tolet pled mad war an doareou ma vever hirio er Franz, hag o welet pegen niverus eo ar yaouankizou en em ro hep an distera mez d'ar gwasa dizurziou, a deu da lavaret : « Paourkeaz pobl, klanv ez oc'h ! Redek a rit gant an hent a gas-d'ar groug, d'an dibennerez, ouz Doue e tlefec'h dizroi. »

Abaoe eur pennad-so ar Franz a ziskouez trei kein da Zoue ; eur brezel kriz a reer da Zoue evel ma oar an holl ; el lezvarnioù, e skolioù ar gouarnamant n'eus hano ebet mui eus Krouer pep tra, eus mestr bras ar bed-holl. Petra na lavarer ket dre waperez enep Doue hag ar relijion zantel ? Daoust ha n'eo ket bet lavaret ha skrivet e skrittur-moull : Doue en deus great e amzer, ne zere tam ouz an amzer vrema, ouz ar « progre » ?

Setu ma teu eur filosof, gwechall den dizoue, da lavaret war e greden, a vouez huel, d'e vro oc'h horjelat dindan ar zamm pouner eus he dizurziou, distroi ouz Doue ma fell d'ez beza pare eus he c'hlenved, dont da veza ken nerzus ha biskoaz.

Pep-hini ac'hanomp, lennerien, a zo eul loden eus ar bobl-se ha da bep-hini ober e lod evit ma adsavo war he zi enorus merc'h hena an Iliz. Ha fellout a ra d'eoec'h anaout ho lod ?

Ah ! n'eo ket a-walc'h anzavout ez eus eun Doue hag ez oc'h e grouadurien. Klevet a rit hano eus eun den dreist, dispar dre e c'halloud, e vadelez, eun den eus ar c'harantezusa, eus ar gwella ma heller da gaout hag e sav en ho kalon ar c'hoant d'e anaout evit e garet, heva en e viguoniach. Mes petra rit neuse ? Klask a rit an tu d'e welet, plijout a ray ganeoc'h e glevet ha komz outan, n'eo ket gwir ?

Mad, setu ar pez a dlefe ober peb-unan en andret Doue evit ma wellao an traou en hor bro garet.

1^o Mes ha gellout a reer gwelet Doue ? Ne hellomp ket, a dra zur, gwelet Doue evel ma 'man, evel m'her gwel ar zont hag an Elez en nenv ; her gwelet a hellomp kousskoude en eur doare, da lavaret eo en e grouadurien, el labour an eus great : an oabl steredennet, a lavar ar Skritur-Zakr, a emban gloar an Aotrou Doue, *caeli enarrant gloriam Dei*. Pa zavit ho taoulagad etrezek an oabl glas sklerijennet ne dle ket beza a-walc'h d'eoec'h lavaret : « O ! Nag an dra-ze a zo kaer ! » Lavaret a dleit kentoc'h gant santiman-chou ar C'hristen : « O va Doue ! ho kwelet a ran a-dreuz an traou kaer hoc'h eus great ha lenn a ran hoc'h hano, ho kalloud, ho furnez, ho kaered, ho madelez war an heol a sklerijen an deiz he war al loar, ar stered a lintr en noz a-us d'am fenn ! »

2^o N'eo ket a-walc'h gwelet Doue en traou kaer en deus great, en urz dudius ma 'n deus o renket, red eo klevet e gomzou, silaou e vouez. N'hellomp ket klevet e vouez evel Adam hag Eva e baradoz an douar, he c'hlevet a reer koulskoude ebarz ar goustianz eu deus roet Doue da bep-hini ac'hanomp. Euni e klevet epr vouez o lavaret : An dra-ma a zo mad, an dra-ma a zo drouk ; klevet a reer Doue en ilizou, o tont da zilaou e gomzou, roet da glevet eus e berz d'an dud dre c'henon ar veleien karget gant Jezuz-Krist da emban komzou Doue, e c'hourc'hemennoù ; klevet a heller c'hoaz mouez Doue, o welet ar gwall-darvoudou a c'hoarvez ken stank en hon amzer. Fellout a reer ober ac'hanomp eur bobl hep Doue, hep relijion, ha Doue a zeu da rei d'eomp da glevet ken krenv ha biskoaz ne hellomp ket tremen hepzan, eo red d'eomp e anzavout hag e enori dre ar vertuz a Relijion. Gwall-vouzar e rank beza an neb ne glev ket e vouez !

3^o Red eo erfin komz ouz Doue. Penôs ze ? Komz, prezek a reer ouz Doue en eur zont d'e azeuli, en eur anzavout ez eo hor mestr, hor C'hrouer ; komz a rer outan, en eur zont d'e drugarekaat a greiz kalon eus ar grasou, ar vad a lak dalc'h-mad, hep skwiza morse etre hon daouarn, en hor galloud ; komz a reer ouz Doue en eur zont da c'houlén pardon gant keuz ha gant glac'har pa hon eus bet ar gwall-er da derri e lezen zantel, en eur lavaret d'ezan gant ar roue David pec'her : *miserere mei Deus*, Aotrou Doue ho pet truez ouzin ; komz a reer erfin ouz Doue, o tont d'e bedi, da c'houlén digant e vadelez divuzul kement hon eus ezom ken evit ar c'horf, ken evit hon ene.

O Franz ! O Breiz-Izel va bro muia karet, distro a-bez ouz Doue ! Da wella mad, da eurgusted, da enor a zo er penn-ze. Na rit ket skouarn vouzar, *nolite obdurare corda vestra !*

KATOLI.

TENNET DIWAR LIZER EUR MIGNON

Ra zeuio Doue da venniga hon labour ha da lakaat Breizis evit mad da garout mui-ouz-mui o Bro !

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet
22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

Le Gérant : F. GOUYETE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENERDOEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANOÙ-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer anezho

Ar brezonneg hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURZEX AN GEIZ.
Gant brezonneg, eo dud ar feiz.
Gant ar gallek ez aia a Vreiz.
FURZEX AN GEIZ.

Dalc'hit hepred d'ho brezonneg
Yez an dud vad ha kalonik.
Yez ar feiz eo; ma vo trec'het,
Ouspenn ar Vez, e vo Poc'hoed!
MHAZ.

HON DEPUTEED !

Ar brezenn hirie en Pariz hon lakaje da c'hoarzin, ma n'ouvezomp pegement a dalvoudegezh o deus al lezennou-ze, graet, koulz laret, evel dre feut, ha ma ne zantjemp ket warnomp katoliked, ar bouez eus al lezennou-ze graet kazi 'n eur c'hoari...

Mar 'peus c'hoant da glevet trouz, et eta, eun de bennañ, da Gambur an deputeed. Eno e welfet traou kaer ! 'N em chakat ha 'n em drailha setu aze o micher; youc'hal a-bouez o feiz, ya, hounnez eo micher meur a zepute, zoken eus Breiz. Hep mont pell, e c'hallfen hanvan unan bennak, evel Kerguezec, Armez hag an Troadec, ar re-man neuze a ve ganti evel dre varc'had ! Ze na harz ket ane da douch beb a bemzek mil lur ar bloaz. Fe, ma zud kez, kenta gwech hou devo c'hoaz digare da voti, evit henvel eun depute, roomp hon mouez da eun azen pevar-zroadeg; hou arc'hant a chomo ganimp, ha c'hoaz hon deve er Gambur eur vouez dispar !

N'oufen ket kaout skunden ebet, eus Kambr an deputeed weskoec'h evit eur stank kannan. N'e ket, a dra zur, evit drouk-komz eus an dud a feson a weler bemde endro d'ei; nan, nan ! Janed, Marijan ha Fanchetta a zo daoulinet war ribl ar stank, beb a ven dindan o daoulin; pell int eus bean komerezed; plijout a ra d'e, koulskoude, konta, ober o zammig kaoz, 'n em didui...

Setu, a greiz tout, ha c'hoari ru etre an ter-man. Janed a lavar da Varijan penôs eo laer evel an dour, ha Marijan ro kolvez da Janed war he fen. Fanchetta, deut da esa lakat ar peuc'h na zale ket da vont war he fenn er stank, an dour a fioc'h hag a silabouez en pep tu ! hag-an dilhad a chom da ganna !

Penôs ive efell dec'h e teufe labour vad eus tre daouarn tud hag a zo an eil gant egile evel kj gand kaz ? An tu klei hag an tu deo ! ar ru hag ar gwent ! ar fall hag ar vad ! (kredi a ran ne feukin lenner ebet o laret penôs ar vlokarded o deus graet kement lezen a zo noazus ouz an oll, beteg hirie, a zo tud fall), hag o mignoned a zo ken fall hag int ! pa grog ar vosen 'n eur vro, pe 'n eun den e pellaer muia ma heller diouz ar vro pe diouz an den ze, ... Pellaet ive diouz ar re ze, o deus gwerzed o ine, d'ar franmaoned, dindan dorn pere eo red 'an oll kerzed hirie !

Evelse 'man kont er Gambur : kas 'n em bigosat etre ru ha gwenn, al labour a chom d'ober, pe e ve gret fall.

Koulskoude, eun depute, mar graje e zevel, 'n eus eur garg pouner meurbed. Hen a hall lakat eur bobl tud da veza eurus pe gwalleurus ! Deputeed hag a dremen o amzer oc'h ober lezenno disprizus, evel ar re o deus graet betez-en, p'eo gwir e laeront tra an nesan, eman o flas ouz ar groug, pe er galeo, rak laeron bras int.

Kredi a ran, lennerien ger, n'eus forz pe gwen, pe du oc'h, e welet an dra-ze skler ! Kaer hon deus digeri frank hon daoulagad, ne welomp ket petore vad a c'hallfe ar re-man bean graet 'n hou bro. Lezen ar zult 'zo eun dra vad, mes n'e ket an fliz, n'e ket Doue e-unan an eus hi gret ?

Pep-hini ac'hanoomp a zo, a dra zur, laouen, da rei eun toullad gwenneien evit ma 'nevo e vro tnd gouiek d'he ren, ha da reizha peb tra enni. Ar

mestr a c'houlenn digant e vevel, eun taol labour bennak; ma ne ra impli ebet eus e bemp biz hag e veud, e vo prest-diskouezet d'ean mauk ar masoner.

Ni ive, dre forz rei arc'hant, ha gwelet petore impli a rer gante, a deu da skwiza ha da laret evel ar mestr d'ar mevel fall.

En gwirione, al labourer n'eman ken war baper ebet !

Al labourer a c'houlenn ma vo bihanaet e draoù; al labourer a c'houlenn an dra-man, an dra-hont... Piou?... al labourer?... Oh ! al labourer ?

Ezom 'zo arc'hant; war gein piou e koueer ? War gein piou, nemet war gein al labourer !

Paour kez labourer ! Al labourer n'eo ken netra ! Gwir eo penôs eun toullad mat ac'hanoomp, gant m'o devo eur bannac'h hini krenv, eur wech an amzer, na glaskfont ket goût pe talvoudus pe noazus, eo al lezen-man pe al lezen-ze !

Ar martolod an eus pansion... ar zoudard an eus pausion... eul loden vras eus hon arc'hant a ya da baeon pansionou.

Ni labourerien, dre ma vern ar bloavejo war hon diousskoa, ne refe ket a zroug d'imp ive kaout eun dra bennak, d'hon zro, rak al labourer-douar na ra ket a our gant ar morzol !

An esperans, a lerer, a ra d'an den bevan; an dra-ze a gredfen a-walc'h. Marteze etre aman ha bloavez ar c'hanved, e tenuio da zonzj da unan bennak eus ar re a c'hoeuz eus adalek ar beure betek an noz, eus an eil penn d'egile d'ar bloaz, evit tenna eus an douar an tam bara a ya en geno an deputeed.

A-viskoaz eo bet kont evelse, a laro eun darn zo, hag, a dra zur, e vo da viken, epad ma vo 'n hon bro tud klouar ha hep kalon, prest hepred da stoui dirak

« Hon Deputeed ! » Eflam AN HENORET.

KREDENNOU POBLUS

— Ma, a laraz Fanch d'in an deiz-all, pa oamp hon daou o tennan patatez, p'a teus kement-ze a c'hoant e larfen d'it treo koz koz ha gwir, sell aman eun toullad; mes chilaou mat ane, me am eus disket ane gant ma zad-koz, ha n'am eus ankouat hini aboute.

— Deut 'ta, Fanch, me 'zalc'ho zonzj ane ive, mar gallan.

— Mat a ri, ma fôtr, ha lez neuze pep-hini da laret ar sort a garo. An dud a zo breman o sevel eman o fenn gant c'hoariello, gant bitrakaj, gant flugaj, ha na gavent mat netra eus an treo a oe groet pe laret gant an dud koz. Ha koulskoude... Te, da vihanan, a chomo dre aman goueomp, hag a reio vad d'it marteze klevet eun ali mat bennak. Ac'hanta, deomp gante dre renk.

Evit ar c'hlenvejo. — Pa fo poan daoulagad, laka aur bugel ganet en uniz eost da c'houeant warnne.

Pa vo techet da fri da wadaw, doug eun alc'houe toull en ez kodel.

Da harz ar boan goste, e fell dougen an oli-fantenn.

Eur bod envor er chiminal a bare ar gorio a zeu war an teod.

Pa fo ar benn-zac'h, bout da benn nao gwech en eur zac'h-bleud-kerc'h, en eur laret hep dizalini : « Benzac'h sac'h, bout da benn er zac'h, abenn ma teui ermeaz e vo yac'h. »

Pa vo ar strakillen gant ar c'hezeg, laka eul lech-boutailh d'e en o c'herc'hen.

Da harz an taroued diwar da loened, laka eur bod huellar er c'hraou.

Ne lezez jamez an trebe e-un war an tan; lakat a ra ar mestr da c'hriзан.

Ne fell gwech ebet lakat an dorz-vara war he c'hein war an daol, rak harz a ra an aviez da derri, ha mar ne lakez ket anei war an tu-ze war ar planken, e tenu an droug aviez d'az loened.

Pa fello d'it gwerzan pe dizôn da leue ha harz e vaim da vlejal, digas anean a-souz ermeaz ar c'hraou, pe laka eun tamm eus beg e lost en skouarn ar vu'e'n.

Evit ar chanz. — Ne fell ket skuban an ti goude kuz-heol, na goude an dilojadeg, rak mont a ra ar chanz d'e heul.

Gwelet eur c'hemenet pe eur plac'h en he fenn noaz, eus ar beure, a gas an treo da fall.

Ne fell ket ive dizon, na kas al leueio ermeaz, evit ar wech kentan, d'ar merc'her, d'ar gwener na d'ar zult.

Lezel dalc'hmad ar zac'h diskoulm, pa ver o vont d'ar park da hadan ed.

Mar chom eun tenu hed ar park, hep bean hadet, e tigoueo kelo mat pe fall, kent fin ar bloaz.

Ne fell ket rastelat dindan ar zaoud, pa ver o skarzan dindane.

Pa vi o hadan ed, taol eun dornad d'al lapoused er c'hleun.

Ne ziskludez ket piked kaer.

Pa weli eun den o vont d'ar marc'had gant eur vu'e'n, hag e teus c'hoant e ve gwerzet, taol eur goz votez war e lerc'h, mes ne fell ket e sellfe an den dre-han.

Eneb ar c'holl. — Pa vo kollet da loened, taol eur goz falz ermeaz; geno ar bleiz a chomo marc'het, ha da loened a zistrou.

Pa fo kollet gwenan, berv dour war ar men, hag al laer a zeuio kerker da vean moal, mar 'n eve ket bet sonj da lakat ar vouteden war ar men.

Mar digezez an alar eus ar park hep he zorchan, e tenuio an demz oll d'he heul.

Ne fell ket troc'han bara-kachen gant ar goutel; ze harz an toaz da c'hoi.

Pa vi kejjhet, (pa fo kollet da hent, en noz, el lanneier), distro da c'hodello war an tu gin, hag e davi da hent.

Da c'hout eus an amzer da zont. — Pa fo c'hoant da c'hout pe a-dren pe war raok ec'h ei an ed epad ar bloaz, laka daouzek greunen war eur bladen da c'hrihan, unan evit pep miz; ar re a ya war raok a gereo, ar re-all a-eneb.

Pa chom eur c'horf maro, raktal d'an ti, e tenuio prestik unan ac'hane d'e heul.

Ar gourdejo, pe ar c'houec'h deiz diwean eus ar bloaz koz, hag ar c'houec'h deiz kentan eus ar bloaz nevez, a laro d'it petore amzer a vo en peb miz eus ar bloaz nevez.

Pa fo c'hoant da glevet al loened o komz, ke da gousket er prezeb da noz an Nedeleg.

Pa gano ar c'hog, espar, e zo seblant fall an ti. Bean 'zo c'hoaz kalz kalz a dre-all. Na 'm eus ket sonj ane breman; varc'hoaz marteze 'm o.

Ma, breman ive d'am zro; petra laret-hu eus kaojo Fanch? Laret ec'h eo red bean kollet e skiant 'benn kredi ane? Laret ec'h eo Fanch eur od ?

PETRA A WELAS ERWANIG

Kontaden savet da Vugale Vreiz

(Diwezan pennad)

A-greis-oll setu i digouezet gant gwrimen ar c'hoad ha dirazo eur menez serz evel eur vogar. Ar marc'h, evel pe 'n dije klevet c'houez ar ger, a hejas e vout gwen-kann hag e lammas a-dreus d'ar vogar. Erwanig spourounnet, a zerras e zaou-lagad hag ec'h en em zantias douget dre an aer ken heriek hag eul luc'heden.

Pa zivasas, e welas dirazan eur vro ha na oa ken eus an douar. Ar marc'h gwen a luske didrous ha skanv, a-dreuz d'eul letonen divent, hep ne blege yeoten dindan e garnion. An aer en-dro d'ezo a oa sader ha glas, evel pa vije diskennet an oabl; eur goulou tener a sikerijenne pep tra ha kement form pe liou a bare ouz e zaoulagad, kement son a zistone ouz e ziskouarn a oa kaer ha dudius, ken e venne beuzi e ene en eur mor a levenez.

Er pellder, ouz torr eur menez, e save mogerion eur c'hastel a lintre evel arc'hant ouz bannoù skedus an heol, warnan touriou, kant-ha-kant anezo, ker stank o begou war an oabl glas ha pennou ar gwez-pin en eur c'hoad bras pe kribennoù erc'hek en eun aradennad menezion.

Dre hirr-gerzet ec'h en em gavjont e-harz ar c'hastel hag ar pont-gwint a ziskennas, d'ezo da zont e-barz. Er porz, ouz o gortoz, e oa eun niver a varc'heien ha barzed gant peb a delen. Ar re-man a ganas war o zeleonoù eur c'hân a zonedigez-vad hag ar varc'heien a stouas o fennou hag a ziskenezas ar vrasa sazaouez (respect) ouz ar marc'h eg e varc'h gwen.

Ma oa bet nec'het Erwanig e tigonezout er vro vuzudus en tu-hont d'ar menez serz, e oe neuze nec'hetoc'h c'hoaz hag e troas e zellou ouz ar marc'h eg a oa breman diskennet gantan diwar e varc'h ha war e zav en e gichen. « N'ez pezh ket a aon, Erwanig, eme heman, setu emomp digouezet er vro vuzudus ac'h eus-te klevet kelou anezi gant da dad; aman eman marc'heien ha sent Breiz o c'hortoz ken na zeuio ar c'houlz d'ezo da zistrei war an douar da adsevel hon mam-vro garet. »

Hag ec'h henchas ar bugel dre zalioù skedus ar palez e lec'h e welent eur hobl a dud a bep oad hag a bep stad a zave d'o saludi dre ma tremenent. War ar mogerion e oa skendennet dispar, ken e seblantent beo-buezek. Breiziz vrudet hag o oberou kaer hag ivez pen-daryoudou hon histor Breiz.

« Aman, eme ar marc'h eg, e welez bugale eveldou o c'hoari e lez roue Emain, en enezen Iverzont. C'hoari a reont ar vaz-dotu, evel bugale Breiz breman, hag i o vevan en amzer koz-koz meur a vil vloaz a zo. Dre c'hoari evel-se c'hoariou ar vro, a zo evel eur skeuden eus ar brezel, e tenas heman a welez e penn ar vugale all da veza eun deiz eur brezeller oll-vrudet. *Ki Kulain* e oa leshanvet ha bet leal d'e dud ha d'e vro evel eur c'hi d'e vestr. Az pezh sonj, Erwanig, da garet bepred da herent ha da zerc'hel da c'hizioù mat da vro evel *Ki Kulain* hag e teui da veza brudet eveltan. »

« Hag e rin » eme Erwanig.

« Pelloc'h e welez an dud kadarn (kalonek) o deus difennet ouz ar Romaned o douar hag o frankiz, en o fenn ar roue Karadoc. Trec'het int bet, gwir eo; o foan, avat, n'eo ket bet kollet, rak daoust d'o armoù ha d'o aour, bis-koaz ar Romaned n'o deus gallet ranjenni tud ar vro-man. Kemer skouer diouto, Erwanig, ha marv, mar bez red, da zifenn da vro c'henidik. »

« Hag e rin, eme Erwanig a hardiesae temha-lan ouz e vleiner. Ha piau ar re-ze a welan gant o saeou gwenn-kann, gwer-deliou, ha glas-mor, henvel al liou anezo ouz mein talvoudus ho kurunen? »

« Ar re-ze eo an drouized hag ar varzed o deus savet ken uhel spered da gendadou hag o

henchet war garout hag heuilh pep braventez ha pep madelez. Eûnet o deus o gwennojen d'ar zent koz a welez aman pelloc'hik. Sed i o sevel iliz Llandaf, kenta iliz ar Vretoned, ha, da c'houdevez, manatioù bras a luc'has evel kel lies a dour-tân e tenvalijen an amzer goz. Setu an daou vrudeta eus ar manatioù-zo: Bangor e Breiz-Veur ha Lan-deveneg e Breiz-Vihan. Du-hont sant Gwenole! Eman o vont da zavetei war e varc'h gwen, Grad-lon, ar roue koz, pa oe benzet ker Is, gant Ahes, ar plac'h diroll. Hag aman e c'hellez gwelet, endro d'ezo eur strollad a zent-all, ar seiz sant benniget « o deus savet Breiz-Izel. »

Erwanig a zic'houge ouz an holl draou kaer a wele, pa gouezas e zellou war eun daolen a zeb-lante, e-tal ar re-all, evel pa vije bet ar rudel-veure o para a-us d'eun draouien leun a devalijen, entanet ma 'z oa gant luc'h an tang-wall, gant ruz e oa, dreist-holl, hag evel benzet er gwad!

« Houman, eme ar roue eo taolen donedigez ar Zaouon er Vro; eun amzer a zabraou hag a la-zere, mar doe unan, ha penn-kentan oll walle-riou hon gouenn. Sed aman Gouartiern, ar roue mezwier, a c'halvas an estren, en e gichen Ron-wen, marc'h ar roue Saoz Hengist, a deuas a bann d'e douela gant he strobinelloù, hec'h ardou, diaonlek. Setu hi aman o veska e voued da vah Gouartiern, difenner ar Vretoned, oc'h ampoezonni anezan. Pelloc'h e welez ar Zaouon, pa n'hellent ket mont da Vreiziz dre eun o vont d'ezo dre zindan. O fedi a reont d'eur hanvez (pred bras), en arrez a beoc'h hag a vignoniez. Pennou ar Vretoned a zired, dizam ha diziskred. Konteliet int holl, tri c'hant anezo, ouz taol ar vignoniez gant ar Zaou judas. »

« Sed aman ho poltred, a droc'has Erwanig, setu c'houi aman o tout war ho marc'h gwenn. En han Doue, piou oc'h, eta, atrou roue? »

« Me, eme ar roue, eo ma hano ar roue Arzur. Kaset ez oun bet gant Doue da adsevel hon Bro garet, er mare ma oa diskaret ken izel gant ar Zaouon ha deut e vije moarvad, a-benn eus ma c'hefridi, eus ma galvedigez santel, paneus eur judaz c'hoaz! Hag e tiskoneze, war an daolen wadek, diem hudur an trubard Mordred a werzas e vro d'ar Zaouon hag a c'houllias e veste en em-gann Camlan. Hag aboue, emou aman gant marc'heien ha sent Breiz er vro vuzudus-ze, a glevjont hano anezi gant da dad, o c'hortoz ken na zeuio an deiz. »

Gwelet em eus e oa eun nebeut Breiziz kalonek o poania du-hont war an douar da eûna an hent. Salo ma teuy an eur hep dale pell! O ma c'houfes, ma mabig, nag a boan hag a zaerou, nag a wad hag a vez a zo oc'h heuilh ar judazere! Ha n'eus ket a judazien hepken eus ar re a werz o mam-vro er brezel, evel Gouartiern ha Mordred Ker gwaz judaz eo nep a dro kein d'e vam-vro Breiz, da vrezoneg, da c'hizion ha da spered e dadou koz. Lar d'in Erwanig pe a du e vi gant an nebeut Breiziz chomet leal d'o bro pe e vi-te eur Judaz evel kel lies a hini a dro kein d'ezi en deiz hirio? »

« O, roue Arzur, a respontas Erwanig, me eur Judaz! Biken, biken! Keitoc'h mervel! »

E keit-se e oant en em gavet e penn pellan sall ar skeudennou burzudus ha setu o tigeri dirazo bolz-lugernus eun iliz-veur. Evel an oabl en eun nozvez goanv, e steredenne ar volz-ze, gant gou-louennet ez oa a gant ha gant a biledou-koar a skede outo gwer livet ar prenestrou ha kizelladur ar pilherou hag ar gwaregou don. Hag ar zent, a oa o pedi, a gronas endro da zant Herve, paeron ar Varzed, ha setu o tregerni a-dreuz d'ar volz, war-zu an nenv e lec'h e tiskanas outan mouez an elez, kan ar baradoz!

Ken dudius e oa da glevet ken e santas Erwanig e nije e spered-hen ivez, da heul ar c'homzou santel, war-zu bro an aelez, hag e cbomas sem-plet etre divrec'h ar roue Arzur.

Pa zizemplas e oa e kreis ar c'hoad, e benn harpet ouz ar c'hef koz touskanet, a-us d'ezan an evned o kana ha pelloc'hik oc'h hiboudal ar

wazig he c'hleierigoù arc'hant. Hag e tenas d'e spered, evel en eul luc'heden, e oa an heol war vout da guz, hag e c'helle e vammig beza nec'het er ger ouz e c'hortoz.

Ha keit ha ma rea tiz war-zu ar ger, ec'h ad-tremene dirazan burzudou bro ar roue Arzur; skeudennou beo a zall-veur a bare ouz e zaoulagad, gant brud tud kadarn Breiz ha gwenedigez he zent koz hag, oc'h en em leda 'vel eur ouel gwadus a-dreuz da splanderion an amzer gwealiel, tachen ar juda-zien, Gouartiern, ar mezwier, ha Mordred, an trubard hudur, hag ar re-ze, henvel outo, a dro kein bre-man d'o bro ha d'o brezoneg. Diweza kouzou ar roue Arzur a dasone ouz e ziskouarn: « Hag eur Judas e vi-te ivez, Erwanig, evel ar re-ze villiget? Pe eur Breizad gwirion a briente d'in an hent da adsevel ar Vro garet? » Hag, evel hep gont d'ezan e save Erwanig e vouezig: « O ya, roue Arzur, me vo eur Breizad! Judaz biken! Kentoc'h mervel! »

N'eus ken.

TRO EUR PLAC'H YAOUANK EN PARIZ

Eur Vretonez eus G... — 'daly ket ar boan had-laret he hano bet embannet en pevar c'horn ar vro gant ar c'hazetennou, — eur vretonez yaouank eus G... a zo o paouez bean gret fin fall en Pariz. N'he deus goneet na brud vat, nag arc'hant en Pariz; hec'h enor he deus kollet, hec'h arc'hant war ar marc'had, hag ouспен c'hoaz; mar deu biken d'ar ger, an hano a deuio ganti vo an hano a dorfo-tourez.

Ar plac'h-man a oa eur fleuren hostaliri, di-wanet, maget ha savet emesk ar chopinou, ar mikou, al leou-douet hag ar c'homzou-all, seurt ma klever en pep hostaliri, rak an ever, 'vit e zaou wen-neg, a hall war an dro lonkan ha... dilonkan; nemet eo gwasoc'h, peurvuian, ar pezh a zeu eus e c'heuo 'vit nan eo c'hoaz ar pezh a ya 'barz. En gwirione, an hostizien na d'eflent ket sevel o bugale en o zi; rak an ever, — al loen hudur-ze, — 'n eus resped evit den, na 'vit koz, na 'vit yaouank, na 'vit bihan na 'vit bras. Savel eur bugel mesk an evaj 'zo 'vel sevel eur fleuren en eur c'haou gon-leru ha tenval; pesort fleuren a vo ha pesort bugel!

Houman eta a oa eur fleuren hostaliri. Eur c'haporal eus Pariz a deuas d'he henti etre daou vanne; plijout a reas d'ei; pa oe achu e zervij, hag hen o kas anei ganlan etouez e dreo-all.

Pa oent arru en Pariz, ar c'haporal a zispignas gwenneien ar plac'h yaouank hag a laras d'ei goude klask hent G... ma kare. E keit se, hen ive a glaskas eun all. Ar Vretonez, gant ar vez, na gredas ket dizrei d'he bro; eur c'houad droug a yeas enni, hag e kanas pouilh, n'e ket eur wech, mes lies a hini, d'he Farizian traitour. Eun dro bennak, — ze oa en mezeven, — ha hi o pedi anean da zont c'hoaz eur wech, d'he gwelet. Eno e kavas e varo. Rôk ma oe fin d'ar wela-den, e lazas anean gant eun tûl kontel.

Ar Vretonez a oa zarret, hag ar zunt-all eo bet barnet. Goulet he deus kement dirak ar varne-rien, ma zo bet true outi, hag eo bet loskaet da vale.

Ar gentel eviti n'e ket kalet. N'eus forz, adalek hirie, dirak an holl, n'eo ken nemet eun dorfo-tourez, dizenor he c'herent hag he bro.

Siouaz! ken stank evel ma koue breman an deliou gant an avel, ken stank evel ma nijont n'ouzon pelloc'h, a-dreuz henchou, a-dreuz parkou, ken stank-se e tistag bemde ar yaouankiz eus ar ouenn vretou he c'hrouas hag he magas, evit nijal warzu Pariz! Parouizion a zo ha n'o deus ken, kouls lavaret, a vrec'hed yaouank; dal ma vent savet, en ker, da Bariz!..

Nep a zizrofe tud hon bro da vont da Bariz, hag a harzfe, goude, Pariz da zont war hon Bro, hen-nez an eve, war bouez nebeut, salvet Breiz-Izel.

AR GER VILLIGET

GANT
LAOUIK

(KENDALG'H)

III

An de ma komans heu histor, Anna a oa bet savet evit kempenn e bauer d'he fried pa deus ar c'houlz d'eau da vend da labourat.

Ne chome ken kazi man ebarz an ti. D'ar beure he devoa prenet eun lamm kig, eur bara hag eur banerad glaou gant he gwenneien diwean. Ar pez a chome eus ar c'hig goude mereu a lakas d'ean en e bauer; eus ar bara e vanas just a-walc'h evit rei bep a dammig an nozvez-ze hag, an de war-lerc'h d'ar beure, d'he daou vogel kosan.

Ne oa ken tam glaou ebet ha koulskoude an amzer a oa yen; rei a raes bep a dam bara d'ar vugale hag o lakas en o gwele, 'dal ma oa tec'het Fanch.

— Mam, a c'houlennas an hini henan an evoa pevar bla, perak ec'h eomp da gousket ken abred?

— Nan eus ken a dan, ma mabig, hag ho p'riou o chom ermaez. Ha neuze me ya d'am gwele ive; kousket aze eta pa 'po debret ho para.

Lakat a raes peb a bok war o zal ha neuze e chomas eur pennadig da zellet oute, he c'halon boaniet.

— O ma eligo paour, emei enni hec'h-unan, petra deufet da vean 'vit an deio pe n'hall'o ken o mam finval?

He merc'h, an hini yaouankan, en em lakas da veskan en he c'havel. Mont a raes da luskellat anei ha raktal e tavas. Laret e vije e sante ar plac'hig pegen bras ezom he devoa he mam a renoz rak ne vije gwech gir eviti. O welet ze Anna, faez ha dinerz, ac'h eas ive en he gwele. Sonjo tenval, evel an de trist a oa o vervel, a deue war he spered. Betek neuze e oa chomet krenv he fianz en Doue, met an de-ze en em zante prest da goll kalon; seblantout a re d'ei bean dilezet tre gantan! Ken pell 'zo e c'houlenne e zikour hep bean bet silaouet! Bep sort zonzjo fall a deus war he spered, alio merc'hed a deus a-wecho d'he gwelct, kentoc'h da drubuilhan he c'halon eget d'he zikour.

Bean oa unan dreist-oll, hec'h amezeged nesan, hag he devoa laret d'ei meur a wech o welet ar boan a gemere da c'houit eur gwenneg bennak ha da viret he zi kempenn en desper d'he faourante:

— « Pebez diodez oc'h c'houi da gemer poan evel-se! Ho pried a gemer e blijadur, perak na ret ket memez tra? Bean 'c'heus kerent, kaset ho pupale yaouankan war ar maez, an hini henan a zo bras a-walc'h evit 'n em denn e-unan. Diskouet d'ho Yan ec'h e ken dleet d'ac'h kaout ho frankiz evel d'ean!

Trubuilh ho pe a-wecho? N'eus ket gwelloc'h evit eur voutailhad gwinn mad d'ober hec'h ankouaz.»

Hag ar plac'h-ze a re ar pez a lare. He den a oa micherour mat, met ever ha dispigner: hi a delc'he penn d'ean! Dal ec'h e d'e labour, e tec'he da di komerezed pe da lec'hio falloc'h a-wecho; kement a halle jachan digantan a vije dispignet evelse. He zi a vije dalc'had an dizurz eunan; he bugale en em denne 'vel ma hallent hag a zave e-kreiz gwall-gompagnonez ar ru; 'benn o dije daouzek via e vijent kollet tre gant ar skouerio fall a welent kenkoulez er ger evel ermaez. Petra re ze d'ei? Yan a gemere e blijadur, hi ive!

Meur a wech komzour ar plac'h-ze a oa deut war spered Anna, met hargas a re ane dalc'hat gant rukun; an de-se e oa ken bras he rann-galon ken e souje:

— Mar esafen eur wech evit gouzout hag-en eo gwir a kas an evach an dubuilh kwit! Pegement e rofen evit ankouaz ma foan ha ma holl nec'hamant, man 'met hel eur zonzjo!

'N em lakat a raes da sorenni. Dihuni 'raes en ur spont ha sevel 'n he c'hoaze en he gwele.

« Ma Doue, emei, n'em eus ket klevet eur glemmaden?... Koulskoude o zriik ec'h int sioul... Hunvreal a ran pe otrament em eus terzien. Gant pesort sonjo fall em eus maget ma spered breman zoudeni... Euzusat ha tristat tra a zo ha nan e ket mougant, beui e gonsianz hag e anaoudegez evit ankouaz! Ha koulskoude nag a hini her gra... Ha, rak na glaskont ket zikour Doue... Ma 'mens klasket anean ha n'an eus ket ma c'haouet! N'eus forz, n'hallan ket beuilh eur rouden all! A-walc'h a fank a zo evelse... Her haspedi a rin c'hoaz fete: warc'hoaz marteze n'em o ken an nerz d'hen ober!...»

Pe oa 'barz ar zonzjo-ze e klevas skei war an nor. Rok he devoa gallet respont e teue eur wreg 'barz ar gampr ha d'he heuilh eur seurez hag eun dimezel yaouank.

— Nozvez vad, Anna, eme ar wreg; penaos eman da gont? N'havees ket ac'hanou ken?

— Eo, Soaz, eme Anna, zouezet; n'em eus ket ankouaet ac'hanout ha zalz a joa am eus ouz da welet.

— Fanch am eus kavet war ma hent fenoz pe oan o tond eus ar marc'had hag an eus laret d'in e oas klavy; kentan 'm eus gallet ec'h on deut betek d'it rak gouzout a ran pegen poanuz eo bean er stad-ze gant bugale yaouank: tremenet em eus dre eno ma unan ha penavet da seurez Mari a zo aman n'on ket hag-en e vijen en bue breman.

— Allo! Soaz, 'me ar seurez, tavet gant ze ha...
(Da heuilh). LAOUIK.

Kentoc'h Mervel

O karomp ar Frankiz, Bretoned ter ha gone, Alo, 'vit he diwall, ato bezomp war zao!
Keit ha ma vo ganimp eur c'houezaden bue, Stourmomp holl eviti, kalonek, hep arzao!

Nag eo spontas ha kriz, allaz! beza gwasket!
Hirvoudi glac'harus en eur skuilha daero,
Ha gouzant ouz lagad an trec'her milliget!
Gwell e vije mil gwech, ta! dir! beza maro!

'Chanta, setu 'deus c'hoant ar C'hallaoued hudur,
D'hon flega dizale dindan o yeo heuzus!
Ha lezel refomp 'ne broiz krenv ha nerzus,

D'ober d'o faltazi, hervez o blijadur?...
Nan, nan, kentoc'h mervel 'n eur enebi oute
Eget beza sklaved en hon Bro ger ean de!...

MATHALIZ.

Fentigellou

Eur serjant, o tigouezout er gambr ar zoudarded, a gav eno Pipi! Gloukez o selaou akelus ouz Jakez Kanfard a lenn d'ezan eul lizer. E keit m'eman o selaou, e vout e vizied e diskouarn Jakez.

— « Petra emout oc'h ober aze, eme ar serjant? »
— « Fe 'ta, eme Pipi, pa n'on ket evit ober ma-unan, e rankan rei ma lizer da lenn da he-man. Met sekrejou a zo warnan (eul lizer a garantez an hini eo, c'houi oar!) ha gant-se e stouvan e ziskouarn d'al lenner evit herzel anezan da glevet.»

Eman Per ar C'hloc'her o kleuzia beziou er vered ha setu eur c'hantreer parisian a oa d'ar mare o weladenni an iliz, o tastaat da welet:
« Sed, emezan, bezion nevez! Evit doare e varver alies er vro-man! » — « End-eun, evel er broiou-all, eme Ber; aman, evel e lec'h-all, ne varver nemet eur wech! »

KELERIER EUS AR BED-OLL

Ar brezel. — Darbet eo d'imp, c'hoaz eur wech, bean bet brezel gant ar Prus. Bet eo tom an treo eur maread, ha setu perak. Konsul ar Prus en Casablanca, er Maroc, an evoa pouzlet soudarded eus Frans da zilezel o zervij ha da dec'hel kwit eus o

rujimat. Pa oant o tanzen mont endro, en kaz, jendarmed eus Frans a dapas ane; mes setu jendarmed prusian o tigouezout ive, hag eun tam krog da zevel. Konsul ar Prus hag a deus betek lakat ar pen'h, ha stoum a-du gant e dud, a dapas eun tol-bout bennak.

War ze, setu ar Prus hag hec'h impalaer o laret da Frans oa red d'ei gouien pardon, abalamour bean anwazet he c'houll. Gouarnamant Frans, evel just a nac'has krenn plegan rak ne oa ket dleet ober, pell ac'hane.

Setu brud a vrezel raktal. Mes a drugare Doue, breman eo sioulaet an treo; kredabl, n'e ket ar wech-man c'hoaz en em stagfomp.

Ma vije savet brezel, Bro-Saoz hag ar Rusi a vije bet a-du ganimp. Ze 'n eus bet gret d'ar Prus ober pep seurt sonjo.

Eun tren o tirouderenni. — Eun tren o vont disul eus Bourdel da Cette, hag eunan soudarded o vont d'ober trizek devez, an eus dirouderennet gant eur « rail » o terri. Peder eur e oa eus ar beure. Bean 'zo dek den lazet ha daou-ugent gloazet.

KELERIER EUS AR VRO

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

Hon beleien. — Hanvet eo bet da berson Plouaret, an aotrou abad Bescond; da berson Pomrit ar Bescond an aotrou abad Kergus, p'erson Pliant; da berson Pliant, an aotrou abad Febvre, p'erson Ruman; da berson Ruman, an aotrou abad Libouban, bet mestr kelennet e k'hoardi Landreger.

GWENGAMP. — Gweturioù dre dan. — Ar gweturioù dre dan a zo tec'het d'o fenn, ha ma c'hoariont troiou awechoù d'an dud a gavont war an henchon, e reont ive d'ar re ve enne.

En Gwengamp, disul, eur marc'hadour tokou an evoa neve brenet eur c'harr dre dan, a fellas d'ean apron anean. Mes pa oa o tout war draou warzu ru Sant-Ervoan, elec'h ober he fleg, ar wetur a yeas war eun d'ar c'hafe Breban. Ha mont en ti 'n eur distar an nor.

Well aze evitan, ar marc'hadour tokou na eo ket tapet.

BREIZ-UHEL

PLERIN. — Daou vogel devet. — Keit ma oa ar vam en oferen disul, hag an tad en e liorz o kutuilhat kol, an daou vogel unan 12 via hag egile 4 bla, a dostaas re dost ouz an tan hag e krogas en o dilhad, an eil diouz egile.

Pan arruas an tad, e oa ken posc'het e zaou vogel, ma zo maro aboue unan ane, ar yaouankan, hag egile 'zo en e eur diwean.

SANT-BRIEK. — Al laer en ti. — Disul da noz, an otro Sailland, advokat, hag e iton, oa et en ker d'an teatr. Pan arrujont er ger, da eun eur, hag et da gousket, an otro Sailland a glevas trouz er gambr dindanan; sevel a reas da vont da welet ha lat eul laer o furchal e vureo. Lampat reas warnan, mes al laer a grogas 'n eur gontel hag a skoas ar perc'hen dre beider gwech; neuze e tec'has kwit o kas gantan seiz mil lur. An otro Sailland a bareo, daoust d'e c'houliou, mes al laer n'e ket tapet.

E Ti-Moulez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bal Charner, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotrou abad Bitez, gloenn kartoz ha skeudennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezjan war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneg.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneg.
Buc sant Anton a Badou.....	5 —
Pedennavigou ha ketennadurez d'ar vugale.....	2 —
Merzerenti an Tad Perboar.....	1 —
Buc an Tad Perboar.....	1 —
Al leaz.....	1 —
Meulodi al labourer.....	1 —
Gwerz sant Milto.....	1 —
Gwerz sant Konori (skeudennet).....	1 —
An diaoul-paotr.....	1 —
Kan an Islandad. Kentoc'h mervel. Peden ar varitadod. Gwerz sant Kemo, hag all.....	1 —

Eun disken war ar priz evit am eur hini.

Hola, neuze! An tre-ze a zo gevier, koutadennou, rimoustadennou, ya; mes na noazout ouz den, na reuz droug da seurt; (pech'ed e ve, meinez tra, meinez, kaout e a greden enne); mest tolet ple, c'hoaz a louk bras c'h diatachou evit ze, ha, mar-terez, a noaz pe ouz an dud-all, pe ouzoc'h ho-unan, ha vianan, a hoc'h ioe.

Enn a ret evel droug kement neventi a ve deut eus d'ar pe al lec'h all, war digare e vent nevez ha d'ar eus a beñ. Fañch, da vianan, oa gred seurt eus an tre-mañ, nemet abalamour an eus klevet ane gant e dud koz.

E dud koz a zo zent evitan; karout a ra ane; kement gir a laret a oa evel eun tenzor evitan. Ha mar 'n eus miret ar rimoustadennou-ze, d'o heul an eus tapet ive meur a dia vat ha fur, ar seurt na gavfet foeltr biken en Pariz, hag a vefe eun tenzor evidomp-ni ive, mar karfemp heuilh ane.

Abeun eun dro-all e welfet, mar 'm e amzer!!

Yñik AR YAOUANK,
Konferanz miz here.
Plounerin.

D'AN O. PERSON

Person neve Plouaret

Ton: *Kimiad ar soudard yaouank*

Parouz Plouaret gwechall he far n'he devoa ket; Peder chapel warn-ugent war he donar savet, Kestel duman ha du-hout, ha tud brudet meurbet: E Treger kaeroc'h 'viti ne oa parouz ebet!

Daoust ma zo bet distaget diouti eur skolpaden, 'Viti ober ar C'hoz-Vard had, an eil evel eben A ra c'hoaz diou barouz kaer. Iliz vras 'deus ar Gant hec'h iliz koz ar Vam n'eo ket chomet war-

Pa oe gret an disparti, e oa er Plouaret Eur beleg meurbet gouiek, ha gant an holl karet, Diwar ben ar person-ze, komzer c'hoaz alies: Eno den, eme ar re goz, 'oa an otro Denes!

Breman ez eus pemzek vla, unan all a zo deut, Mat ha kalonek ive, daoust ma seblante reut, Eur beleg santel da vat, ha n'ouveas biskoaz Chanj a liou d'ar wirione. Maro ez eo, sionaz.

Eur ween kouet d'an douar e c'haller kat he ment; Pa ve tremenet an den, anveet diagent, Ez ep ezetoc'h ive gout e dalvoudegez, Hag ar mignon c'hiall neuze komz eus e vadelez!

An otro Stephan, dalc'hmat, didamant a zo bet Eo e genver e-unan; kenver re-all n'oun ket. N'en nevoa kamet disket rei eun tu-gin d'e c'hir, Na trei pen gant pep avel; trempet 'oa evel dir!

Plouaridiz, diwallet d'ankouat anean! Eboan koulz hag e arc'hant 'n eus dispignet aman! Ar skol gristen, an iliz, ha gweren-vras ar c'heur A laro 'oa 'n em roet, 'vel 'n em so ket nemeur!

Ar barouz, pa aruaz, war goz a oa eun tam, An otro Stephan zoken 'gave pouner ar zam! Met souc'h e alar oa mat, hag e brezegeun Tam-ha-tam 'deus digozet douar ar c'halono!

Hag o furchal an douar, eun de an eus kavet Eur goz-vedalen velget, eno pell oa kuzet; Gwalc'het 'n eus ar vedalen, warni tizoloas 'N eun tu skeuden ar Werc'hez, 'n tu-all skeuden

Setu ar vedalen-ze, 'n otro Stephan maro, Roet d'an otro Bescond, misioner hon bro, Kouean 'ra etre daouarn ha n'emaint ket e noaz, Daouarn 'rey d'ei, a gredan, luc'han eun tammig

Komz eus an otro Bescond a ve, sur, poan gollet, Rak dre ar vro n'eus hini eveltan anveet, Anveet 'vel prezeger, ha poanier didamant, Elec'h ma ve 'oar ober labour kement ha kant!

N'ho peus ket klevet 'nean meur a wech 'n hoc'h Han'ho peus ket lavaret: Hennez kammet na skwiz, Pa ve eur gir o tont 'maez, kichen an toull dek all A ve o voutan warnan, hag holl vent dishual!

Ha kaerat da vrezoneg a ouve dispakan! Nep heu klev a renk laret: Tremenestr eo heman. 'N e c'hoari ar Brezoneg zo dous d'an dioukouarn, Evel ma'z eo ar voulos hag ar ze d'an daouarn!

E keit ha ma 'n eus troet endro da Blouaret, 'Vel kure pe 'vel person, karante 'n eus kavet; Perwenan, Plistin, Gwengamp, Plunet, Paonrit- [Beskont N'o deus ket c'hoaz ankouezet hano 'n otro Bescond!

Evit an dud a bep oad, e galon digor-frank He deus an tu da c'honit dreist-oll an den yaouank, Dre lec'h ma'z eus tremenet, ar yaouankiz dalc'hmat He deus bet kavet ennan eur mignon hag eun tad!

Karante e genvreudeur, 'n eus pell-ze goneet, Rak da rei dour ha sikour, eveltan nan eus ket, Ha pa 'z eo dent ar c'helo 'teus da Blouaret, An holl o deus lavaret: dibab-mat a zo gret!

Itron Varia Blouaret, d'ec'h ma gir diwezan, Biniget an 'Tad neve, hag e barouz gantan, Skoulmet erfat ar chaden 'stago ar c'halono, Ouz Doue, ouz ar pastor, hag ouzoc'h war eun dro!

G. D.

MOUEZ EUN DELIEN ZEC'H

Ar wazig war an trez a rede ken founnus, An avel er skourou a voude dauntus; Eo evnig, kreiz e gau, eme krog an derzien, Klevet an eus tennou c'h hekleoi en draouien.

Ha dindan bolz velen eun derven kantvloaziek, Eo gourve war ar yeot, ma brech war ar garrek, Hep hi c'hompren ervad, ma chilaoue eur vouez; Mouez ar grouadelez a gomz d'imp hep paouez.

Ezen fresk avel Du 're d'an deliou krenan; Ma lagad, hep flach tam, a baris war unan; Eun delien melen-aour, kras, dizec'h ha brusket, C'hoant d'ei ma c'hentelian 'rok disken en toufle.

« O! den yaouank a Vreiz, teneret da galon, A laras an delien, en diskan eus he zôn, Chilaou an delien gras, 'barz mach'ei da netra, Chilaou hi gant evez: tremen a ra pep tra.

« Tremenet an devez ma vourboutonen drant; Nijet eo an deion ma tispaken ken koant Freskadur ma c'hened d'an oll dremenedi, Keit ha ma tiskwizent 'n em disheol, gant dudi.

« Klevet 'm eus ar falc'hor, skeud gwirion an Gwelet em eus diskar an toc'had en anchou, Ar bleunioe o tispak, o frikan en eun de, Hag an den, aheurtet, o chom dizablant tre.

« Gant ma C'houer c'houlan, arók 'vin dismantret, Ma tenno warnon skouer nep an eus disheoliet; Goulen a ran koueet 'n eur laret d'an oll dud: Tremen a ra amzer, kened ha nerz ha brud!

An avel a vout gwaz; an delien distaget, Pell pell eus ar ween gantan 'zo bet skubet, Mes keit ha ma c'houarnij, didrou hi lar bepred: « Me a ya da netra, c'houi, den c'h a 'd'ar vered!

PEN-BRETON.

E GWERZ: Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ I:

An Teir C'had hag ar Mevel laer

daou bez-c'hoari farsus dastumet gant KLAODA AR PRAT.

Peziou koant ha mat tre da vean c'hoariet gant pôtrez yaouank ar patronajou.

Al levrig: pevar gwenneg.

A bep tu e teu d'imp gourc'hemennou evit al levrig-ze a zo lennet betek e Bro-Wened. Setu aman ar pez a skriv d'imp eul leunerev vat a Wened: « E tan a zigemer ar Mevel laer hag an Teir c'had. Brau! Eutren ar Prat, hag inour d'oh! » Tregeriz ha Leoniz, ne chomomp ket warlerc'h ha lennomp, ni ivez, oberou hon mignon mad Klaoda. Dudi a zo a-leis, ouz o lenn.

E GWERZ

Peziou neve gant DIR-NA-DOR

POTR E VRAGOU BERR -- TOG JANI

(ar pez-man bet d'ean an eil priz en Plougastel).

Peziou gret, an hini kent'an, evit pôtrez yaouank pe krennarded, an eil evit merc'hedigo.

Al levrig: 5 kwenneg.

Ar re a gemero meur a hini, 'vo gret d'e disken priz.

Setu aman peziou berr hag ezet da c'hoari; n'eus ket ezom a wiskamanchou kaer na koust ebet 'vit o c'hoari. A hendall eun dra beo int, fentus ha skouerius war an dro.

Breman, epad ar goanv, er patronajou hag etouez ar vugale hag an dud yaouank, emad ar gwellan koulz da zeski peziou hag a rey dudi ha plijadur kement o gwelo.

Perak ne gavfer ket pôtrez yaouank hag 'n em glevfe etreze da zeski peziou evel ar re-man, re Klaoda ha re Dir-Na-Dor, ha d'o c'hoari er parouziou?

O digoll o defe, ha vad a rafent d'e o-unan ha d'ar re-all.

Memes tra, ar merc'hed bihan a hall deski ezet bras eur pezig evel *Tog Jani*, gret ispisial eville, eur pezig fentus hag ennan eur gentel c'houek.

'Vit c'hoari ar pez-man, petra 'zo ezom?

Peder blac'h vihan, eur banerad pilhou, tri pe bevar dog plac'hed, eur boned hag eur mezellour, ha netra ken.

'Vit c'hoari *Potr e vragou berr*, eur c'hoz vragou, eur gazel, eul letern, diou pe der skudel hag eur gwiskamant paket 'n eur doubier.

'Vit c'hoari *ar Mevel laer*, n'eus ezom nemet daou bôtr, ha netra ken.

Ar gwiskamanchou, er peziou-man, a zo holl 'vel war ar meaz.

Hastomp eta prenan ar peziou neve, ha d'al labour raktal, *ma tevio pep parouz da gat he strollad c'hoarierien ha c'hoarierezed, hag eun tam diduamant eur wech an amzer d'ar zul.*

TOLET PLE MAT!

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paeen eiz gwenneg dre vil nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement assurans a zo, assurans tan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherourien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri matez pe mevel, pe tud impliet dindanan adle kas kelo da E. AR MOAL, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou en arondisamant Gwengamp.

Da gaout GWIN MAT HA RIE skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vruet: *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN O

Le Gérant: F. GOUYETTE

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
3 skod evit ar broio estren hag evit ar Broio keltiek.

REZENEROEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourion).
AR YEODET-BOCHER.

EMBIANNOU-KONVERZ HA
KOUMANACHOU

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charner, a zigemer anezhañ

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURNEZ AN GER.
Gant brezonek eo d'eur ar feiz.
Gant ar galleg er arto a Vreiz.
FURNEZ AN GER.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve troc'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Peche di
MILIN.

Disul, 22 a viz du, sul an Anaon; oferen ha
pedennou evit an Anaon laeret gant ar Gouar-
namant.

ALI

Hep dale nemeur, lennerien Kroaz ar Vre-
toned o devo an eurvad da lenn amar an droidi-
gez vrezonek eus eur pez-c'hoari savet gwechall
gant an Otro Dantec. Sant Eflam;

Ha neuze, Ma Beaj Londrez, gant Kloareg ar
Wern, eur pez labour hag a baro eus ar gwellañ
Ma Beaj Jeruzalem.

Ali-all

Kroaz ar Vretoned a zav gant gouel Nedeleg eur
c'hrog etre he lennerien, bihan ha bras.

Rei a ray prijou d'ar gwellañ marvailhoù a vo
kaset, 'benn an de kentan 'r bla, da E. Ar Moal,
27, ball Charner.

Pej-hini a ray e labour war ar seurt a garo,
nemet ne vo ket ennan ouспен daou c'hant hanter-
kant lioen, heb lineannoù Kroaz ar Vretoned.

Levriou brezonek a bep seurt a vo roet evit
prijou.

DISKAR-AMZER...

D'am miguon E. A. H...

Warlerc'h ar gousperou Erwanig a deue d'ar
ger, hunvreoù ha dilavar. Evitan an abardevez
diskar-amzer-ze an evoa eun dra bennak a vel-
konius, a blije d'ar spered, daoust ma samme eun
tam ar galon; eun dra bennak a c'houzanver reiz
hep gallout koulskoude heñ displega ervad; eun
dra bennak dirak pehini e chom an den en e zav,
hep gouzout kaer pelec'h mout... N'eo ket keun,
n'eo ket glac'har, n'eo ket spi ha bezan eo ive
war an dro, an eil hag egile...

Eun heolig seder a-walc'h, mes dinerz, a chome
c'hoaz da furchal ar brouskoajou hag a zebante
en eur gimidi, kemer plijadur o teurel eur zell
diwean war al lenneier morgousket... An evned
bihan, strafilhet gant eur bed hanter-varo, keun
d'e d'an amzer dremenet pe, piou oar? aon d'e
rak an amzer da zont, a skoe digalon eun dis-
kanig en-kreiz ar peuc'h aukenius. Er c'hoaz
sioul evel eur vered, ar gwe bras, souñ ha mud
evel mein-hir, a vire war o deliou siel ar pok
karantezus roet d'e gant an heol o vervel. O
deliou melenet a zebante eur ban a levenez,
chomet d'ambrougi, da gennersi an douar war
hent digompouez ar goanv...

Ha, hunvreoù bepred, Erwanig a gerze, Erwa-
nig a sonje... An dra bennak-ze, gouzanvet reiz
mes dies da zisplega, a oa henvel-beo ouz stad e
galon; an heolig seder, dinerz breman, a oa hen-
vel ouz ar garante-ze, a baras warnan eun de hag
a entanas e ine; an evned gant o diskau klemmus
a lavare d'ezan, re vad, siouaz! e blijadur dre-
menet, kouezet breman en ankoua... Lioua laou-
ret deliou ar c'hoaz a oa henvel ouz eur c'houez-
vad deveziou diagent, a wele c'hoaz pell du-hont,
hag a deue, dre o envor, da vuntr e galon di-
lezet... Hag an deliennou a zistage diouz ar
skourioù, a goueze war an douar gant eun drou-
zig sech... Oh! ar re-ze... ar re-ze a denne di-

gant klemmadeunou! Evelse ive e koueze, a hini
da hini, esperiou e galon, e nije, a hini da hini, e
hunvreoù ken kaer...

Paourkez Erwanig!

Enpad e servij en em lakas d'ober lez d'Helena,
eun dimezel koant o chom en ker a damdost d'e
gazern. Gonit a reas he c'halon, hag etre an daou
den yaouank e kerze mad an treo. Evitan da vezan
eur pòtr brao, gwisket en giz ker, bet eun tammig
diskadurez ha pinvidik mat a-beurze e dud, Erwa-
nig na oa ket groet evit Helena. Eus eun tu-all,
savet en ker, renet ganti eur vuez dimezel, He-
lena kennebeut na oa ket stummet da veva war ar
maez, na da ren eun tiegezh... Mes, en em garout
e rent; hag ar garante, ma Doue, a zo dall!

Erwanig na vev nemed dre Helena; taer,
peder gwech ar zun e skrive d'ei ha gant hast e
c'hortoze devez an eured. Ar garante etreze a oa
bras eta hag, en despèt d'alioù e dad hag e vam, a
c'houlle digantan alies petra a raje gant eun di-
mezel, eured Erwanig hag Helena a dlee kavout
lec'h.

Allaz! evit eun digare pe digare, troet gant
teodou milliget, eun devez Helena a laras nan.

Kalon Erwanig a frailhas. Kojl e vuian karet...
Dilezel e hunvreoù... Bruzuni e vuezeg! Ha peñs
beva goude?... Hag enpad daou viz hen na reas
joañstet abed...

An oad a greske; an diskar amzer a deue...
Ah! kredet, pa ve bet diframmet ar galon, n'eo
ket brao lakaat anei da hadkriki e lec'h all goude...
Gwaz eo ze d'an dud yaouank o deus kalonou
tener, kalz a boan o devo da c'houzanv!

Hag Erwanig a sonje bepred... An evned a
dave, an deliou a goueze ha sioulder an abardevez
a waske e spered gwasc'h-gwaz. An heol a oa
kuzet; eur voren dener a garge an traouiennou
hag al loar velen a bigne en bolz an Nenvou, evel
eur rouanez dispar. Erwanig na zelle ouz netra
hag a gerze bepred...

En displeg ar c'hoaz-hent, a damdost d'ar ger,
e tigouezas — hep gònt d'ezan avad — en kichen
Soazig Kertanguy, a zistroe eus kerc'hat he loened.
Evel ma plije d'ezan chom e-unan gant e c'hlac'har,
Erwanig na laras netra da Soazig. Mes en eur
dremen, hep komz outan ouspenn, houman a
dolas warnan eur zell, eur zell ken don, ken
dous, ken tener, ma laras Erwanig hep sonjal:
« Brao an amzer, Soazig! » — « Ya, ya, kaer eo,
Erwanig... »

Soazig a dalc'has gant he hent... He mouez a
zistonas ken dudius en e ziouskouarn, ma vanas
Erwanig eur pennad da zellet war e lec'h.

Gouzout a re aboue pell amzer, e hirvoud
Soazig, o sonjal ennan. Netra a rebechus en ke-
ment-se, pegwir Soazig hag hen a oa savet ki-
chen-ouz-kichen, koulz laret e dud o doa, meur a
wech, komzet d'ezan eus Soazig, eur plac'h diwar
ar maez, fur, kelennet mad ha d'ez e galon-
aour; mes, ma Doue, ken dallet e oa gant
« manzel » Helena, ma na wele nemed drezi.

Biskoaz n'en doa sonjet an disteran tam en
Soazig, koulskoude henoz ne gave ket anei ken
divalo-ze; hag he gir diwean, Erwanig!... a
zistone ken brao en e ziouskouarn, a goueze ken
flour war e galon!... Hi a dec'he ken moustr, ken
meür, ken skanv...

He zellou a oa ken dous, he c'homz ken karan-
tezus, dreist-oll da glevet dindan an derv, pa prog
an noz da voren ha pa deue eun hanter-denva-
lijen da lakat Soazig henveloc'h ouz eur skouden
goumoulus eget ouz eur Grouadurez... Hag o
tigouezout er ger, dre ma lec'he breman sonj

kazus Helena diouz e spered, e kreske ennan —
hep gònt d'ezan bepred — hini Soazig...

Hep hen laret, en eur c'houzanv en peuc'h, en
eur hirvoudi bemde, Soazig he doa karet Erwanig
ha karet anezhañ eus eur garante leal ha gwirion.
Erwanig n'an evoa biskoaz lavaret gir da Soazig;
e galon a oa d'Helena. Helena a droe he c'hein
d'ezan: koulskoude, emezan, mar 'm ije karet
Soazig kement-all, biken honnez n'he dije groet
ze d'in... Perak ne garfen keit anei breman?
N'ou ket re diwead...

Ar sonj-se a yeas don en e spered hag enpad
eun nebeud nosvezioù, Erwanig a gave dalc'had
eun digare bennak da zont d'ar c'hroaz-hent;
bemnoz e wele Soazig, hag eun nosvez, dreist ar
re-all, ec'h anavezas outi e garante...

An noz-ze hag an deveziou warlerc'h sonj an
diskar-amzer na zammas ket e spered...

Oc'h unani, unan he hirvoudou, egile e c'hlac-
'har, Soazig hag Erwanig a reas eun evrusted.

Aboue n'odeus nemed plijadur ha bep bla, d'an
diskar-amzer, en eur vale dre ar c'hroaz-hent,
Soazig a lar d'he fried gant he mouezig, bepred
tener: « Gwelet a rez, ma foñr kez, pegement eo
diaviz an dud o redek warlerc'h hag o vont pell
da glask an evrusted; evrusted an den a zo en
e vro, o sevel, o limezi, o vevan gant e boan hag o
vervel en peuc'h elec'h m'eo ganet! »

AR YEODET.

PREZEGEN WAR MARO MIKEL MORIN

(Brezonek Kerne)

Omnis homo mortalis!

Pell amzer 'zo, paresioniz,
Aboue d'in ma remerkis,
Eun dra hag a zo nesesser:
Holl, siouas, mervel a ranker,
Holl oep dalc'het d'ar maro kriz

Omnis homo mortalis!

Pa zellan ouz va holl leoriou,
Pa eil-sonjan en istoriou
Eus an amzeriou tremenet,
E remerkan enno skrivet
Peñs Cesar, Napoleon,
Cyrus, Achil, Agameunon,
Epaminondas, Tamerlan,
Xerxes ha Thamas-Koulikan,

Ulis, Hector ha Pompe,
Alexandr, Anubal ive,
Ha memes beleg lach ar Bailh,
O deus ranket lammet er baillu
Ha mervel, en depet d'ezo,
Hep respet ebet d'o baro.

Koulskoude, an holl lekturioù
Am eus gret eus o gwall-euriou,
N'o deus ket kement va skoet
Ha ma en deus va glac'har,
En eur-ma ha hirio an deiz,
Morin, maro ganimp e Breiz.
O krenit, plant bresk ha dizouten,
Gwe uhel, izellañ ho penn:
Sedr al Liban a zo kouezet,
Perak ne vec'h-hu diskaret?
Evit rei da intent gwelloc'h,
Piou ne varvo ket, a zont d'oc'h,
Pegwir Morin a zo maro?
Allas, netra, den n'achapo!
Kredit mat se, paresioniz!

Omnis homo mortalis!

Siouas! Holl mervel a ranker!
Na pebez setanz en tri c'her!
Setu te breman, Morin gez,
Evel biskoaz bet ne vijes;
Bet out, mes allas, ne dout mui:
Sic transit gloria mundi!
Tolit evez, paresioniz

EUN DEVEZ A DRUBUILH

Red e kredfach,
Pe ma ne gredfach,
Ne servij ket kontan d'ac'h.
Me oa bet an de-all an eur park bras,
Panevert 'ban denet er-maez, 'hoan ennan c'hoaz.

Setu arn hir an noz, arn eo adarre amzer ar c'hontadennou; berroc'h e ve kat an amzer o klevet pe o laret eur marvailh bennak en skeud ober eur c'hornedad en korn an oaled da c'hortoz mont da gousket.

Ac'hanta, ma c'henvroiz ker, mar karet, e larin d'ac'h eur gontaden bet kontet d'in gwechall pa oan krennard. Teuyezout refet digarezi ac'hanon mar 'n em dromplan hag an hini a oar anei resoc'h evidon, hen pedan da gemer e blien evit he skrivvan pe lemmen beg e deod d'he displegan plen ha reiz evel eman, er pez n'oun ket evit ober.

Bean 'oa gwechall, lakomp en Kergogwen, mar karet, unan goz hag he devoa eur mab. Heman 'vije bemde o klask lamou koad da ober tan hag o kerc'hat bannac'hou dour d'an hini goz kez d'evan; ze oa e vicher.

Eur merc'hervez ar heure, e vam a laras d'ean : « Arsa, Yan, emei, (Yan oa hano he mab) te dlefe mont da Gallak da brenan eur boezellad segal, pegwir hirie 'man ar marc'had ha foar a zo ive, (foar hanter-here oa 'n de-se tremenet eo adarre). » — « Ma, eme ar pôtr, me ya da vont dioustu. » — « Gortoz 'ta me e vam, az po arc'hant. »

Mont a reas ar pôtr 'trezek Kallak, mes 'ben e oa arn er bourk 'n evoa ankouaet da betra e oa laret d'ean mont da Gallak, hag hen d'ar ger war e giz. « Dabeta, mam, emean, ho poa c'houl laret d'in mont da Gallak? »

— « Petra, kaz-ludu, ankouaet e teus? Laret 'm oa d'it mont da brenan eur boezellad segal. Lar en eur vont gant an hent : Eur boezellad segal! eur boezellad vat a zegal! hag evelse n'ankouaet ket. »

— « Ma, 'me Yan! » Tapout a reas e votou 'n e zaouarn (an amzer oa gleb, 'met n'eus fors) ha war rôk en eur laret. « Eur boezellad segal, eur boezellad vat a zegal! »

— « Pan eruas e-kichen ar Gergaer, e tremenas eur charetour o charre teilh, ha Yan a lare : Eur boezellad segal, eur boezellad vat a zegal. »

— « Petra larez-te, 'me 'r charretour, eur boezellad segal dimeus eur garg teilh? Lar da vihanan. Eur garg heilh! eur garg vat a deilh! »

— « Eur garg teilh! eur garg vat a deilh! eme Yan. »

En-kichen ar C'hoz-Park, e welas eun interramant o tont a-dal d'ean gant an hent. Yan a rede bepred 'n eur laret : « Eur garg teilh, eur garg vat a deilh! » Unan bennak eus an dud a oa ec'h heuilh ar c'horf maro a roas eun skouarnad da Yan : « Petra 'mean, te ra eur garg teilh gant eun den maro? » Welloc'h eo d'it sur laret : Doue d'en pardono, Doue da vean gant e ine! Yan a lare 'n eur ouelan : « Doue d'en pardono, Doue da vean gant e ine! » Ha war-rôk betek Lanneg ar c'hog.

Eno oa tud o krougan eur blei. Yan a rede.

— « Doue d'en pardono! 'mean, Doue da vean gant e ine! » — « Hep! gortoz, pôtr, tosta aman! Petra larez? Doue da bardono ine 'r blei! Ar blei n'an eus ine bet. »

Tapout reas eur skouarnad bennak adarre ha laret d'ean laret da vihanan : « Me gar e voungfe, me gar e ve mouget! » Ha Yan a laras evelse.

Pan arruas en Lez-vaez, e oa eur fornier o klask c'honezan an tan en e forn; gor gleb oa gantan hag an tan na groge ket. Kredet hardi ne oa ket a stad ennan, ha klevet Yan o laret : « Me gar e voungfe, me gar e ve mouget », a lakae mui a zroug ennan c'hoaz. Mar doa bet skouarnadet Yan arôk, en dro-man an evoa bet e stuff avad.

— « Ha breman, 'me ar fornier da Yan, ec'h ez da laret : « Me gar e krogfe, me gar e ve krog. »

Ha Yan war-rôk 'n eur laret : « Me gar e krogfe, me gar e ve krog. »

Arn en Sant-Trefin e welas tud klask laza eur c'hi klanv; Yan a lare : « Me gar e krogfe, me gar e ve krog. » Tapout 'reas fest ar vaz adarte, skler eo d'ac'h kredi. Wel 'vije d'it laret : « Me gar e varvfe; me gar e ve maro. » Yan bepred ken sentus ouz an holl, a lare 'n eur zec'han a zaerou : « Me gar e varvfe, me gar e ve marv. » Pa oa leusket Yan a ye war rôk, ha na oa ket hualet.

Arruout reas er Goz-stang. Eno oa eur c'hairec hag eur marechal klask c'hovezan 'n tan da houarni pe da geilhan eur rojou kar. C'hoarvezout a re gante 'vel gant ar fornier ne groge ket e dan. Yan arruas hag a lare d'e c'hoaz : « Me gar e varvfe, me gar e ve marv. »

— « Daoust pesort gonid az tevo, mic'hieg, o welet an tan-ze o vervel? » ha bec'h da Yan adarre, n'ho peus ket ezom da c'houl.

Lar da vihanan : « Me gar e veint suilhet ha deveit tout, 'zo welloc'h d'it! » — « Ma 'me Yan, me gar e veint suilhet ha deveit tout! » ha da Gallak.

Eno e welas tud o poanial da laza eun tan-gwall, ha Yan a huc'he : « Me, mean, a gar e veint suilhet ha deveit tout. »

An archerien oa eno a zerras ar paourkez Yan en toull.

D'an noz e oa leusket ermaez. 'Ben neuze, vat, e oa gwerzet ar segal. Na pa vije ket, Yan nan ouvee ket, pell a oa, da betra oa laret d'ean mont da Gallak. An arc'hant 'n evoa bet da brenan segal oa chomet gantan, da vihanan; hag hen o prenan bara. Prenan reas pemp lur vara gwen; tapout a reas an dorz dindan e gazel ha 'tresek ar ger.

(Da genderc'hel).

Disput etre al labourer hag ar martolod

Chilaouet hag e klevfet kanan,
Hag e klevfet en gwirione,
Ar merdead hag al labourer,
Ha krog 'tre 'n eil hag egile.

Ar merdead a oar ar galleg,
Hag a zo laouen da disput,
Hag a ra d'ar paourkez labourer
Serri e veg ha mont d'e giud.

Al labourer

Chancl da chupen, paourkez merdead,
Rak poan a rez d'in 'n em c'halon,
C'houez fall a zantan gant da zilhad,
Fleria reont gant ar « gaodron ».

Ar martolod

C'honez ar gaodron a zo eun dra c'houek,
Betek ar merc'hed koant hen kar,
N'e ket 'veldout, paourkez truilhennek,
Bemde o turial an douar.

Al labourer

Panevert 'c'h an da labourat,
'Vit d'az beva, dre mac'h on sod,
Panevert-ze, paourkez merdead,
Te 'z pige na bara na yod.

Ar martolod

Ma ve red d'it pignal er gwernier,
Beva gant gwesped ha gig sal,
Chom war ar pont epad peder eur,
Te, labourer, 'c'h afe da fall.

Pa vez er park o toullan 'n ero,
Dindan da dreid e ve kalet,
Ha me, war ma zam planken dero,
Ve 'n danjer da veza beuzet.

Te a gred d'it, paourkez merdead,
Ne ve kavet neb lec'h da bar,
Me ve 'pad daou viz o labourad,
Bemde krog en lost an alar.

Ha goude pa ve dare an ed,
Hanter-fritet gant an heol hanv,
E ven er park war ma falz pleget,
Ha goude c'hoaz, 've red dornan.

Ar martolod

Ha pa vez te, paourkez labourer,
O vale en asambleo,
Pelec'h 'ven me? Gwech war ar reier,
O stourm ouz neiz ar gwagennou.

Pa vez te, er ger, 'barz da lochen,
Kichen da bried kousket mad,
Me ve gourveet war ar pleuken,
An avel ouz ma luskellad.

Al labourer

Gwir a lerez, paourkez merdead,
Plegan renkan d'it, ma mignon,
Klevet em eus n'eus ket kaeroc'h stad
Evit an « Navigation ».

Estig Sant Per.

AR GER VILLIGET

GANT

LAOUIK

(KENDALC'H)

III

— Izkuzet, ma c'hoar, ma peurachuin ma c'hoaz; dre chanz em eus bet kavet anei 'barz ar ru hag em eus komzet d'ei diouzit; bet he deus ar vadelez da zont ganin, ha, d'he heul, an dimezel vat-man a anavez marteze. Na rez ket! Ma, souezet on...

— Gwelet a ran, Soaz, 'me ar seurez, en eur vonsc'hoarzin, penaos, mar lezn ac'hanoc'h da heuilh ho kuden, na vet ket er penn 'benn eun hanter-eur aman. Lezomp ar c'hojo breman eta, ha greomp eun dra bennak. Evrus omp, ma mignonvez kez, emei d'Anna, he deus digaset Soaz ac'hanomp d'ho ti. Bet sur e refomp eus hon gwella evit dousât ho poanio.

— Ho trugarekaat a ran eus ho madelez, eme Anna... N'hellas ket laret hirroc'h, hag an daero a deuas en he daoulagad; ken poanuis e oa eviti, bet kustumet 'boue he yaouankiz da zikour ar beorien endro da di he zud, da vean zikouret evelse breman.

E-pad ar gaoz-ze, an dimezel a oa et da wele an daou botrig, a oa dihonet, hag a zelle souezet ar pez a dremene. Lakaat a reas bep a bok war o zal ha rei d'e bep a doullad madigo eus he godel.

— O koantat bugale hoc'h eus, itron, emei!

Kalon ar vam a dridas o klevet ze.

— N'hoc'h eus ket 'met an daou-ze? emei c'hoaz.

— Eo, eme Soaz, a gemere ar plac'h vihan eus he c'havel, pa n'halle ken laret gir, hag unan na rey ket mez d'ar re-all.

Mes ar seurez a dispak eun davanjer a oa ganti; komz a ra a-goste gant an dimezel, ha raktal e tiskan e-traou. Hep dale ec'h e dizroet gant eun bakaden dreo hag eun den war he lerc'h, eur zac'had glaou war e chouk. Laket e oe ar glaou a-goste ha gret tan. Neuze ar seurez a dispakas ar bakaden hag a dennas diouti bara, kafe, kig leue ha diou voutailhad gwin.

— Setu aze, emei, danve koan ha lein evidoc'h hag evit ho pugale. Warc'hoaz e teuo ar medesin d'ho kwelet hag e roo dac'h al louzeier hoc'h eus ezom. Ni n'hallomp ket chom pelloc'h, rak nan oc'h ket hoc'h-uanan en dienez, siouaz! Soaz a chomo eur pennadig c'hoaz, p'eman he merc'h henan er ger, hag a rey koan arôk tec'hel.

— Digaset hoc'h eus d'in ar gwellaun louzaou evit ma yaoc'haat, eme Anna, he c'halon leun a anaoudegez; nan hallin biken ho trugarekat a-walc'h.

— N'hoc'h eus trugare da laret 'met d'an dimezel aman, rak he yalc'h a ra an dispiguo.

— Ne ran ket 'met paeon ma dle, 'me ar plac'h yaouank; kenavo, itron, ha gwelloc'h yec'hed; hep dale e teuin c'hoaz d'ho kwelet.

Pokat a rejont d'an tri vogel hag ec'h ejont ermaez. N'ho devoa gret 'met serri an nor, p'en

em gavas dirake eun den berr war e alan hag e zello spontet; souzan a rejont ouz e welet.

— C'houi 'zo o tont eus ti an otro Marrek? emean.

— Ya, emé.

— Me zo o vont da laret d'e bried ec'h e koneet breman zouden en porz an ijinerez hag ec'h e kaset d'an hospital.

— Izelaet ho monez, en han' Doue! 'me ar seurez; n'e ket maro?

— Na oa ket maro war an taol, mes 'benn breman ec'h e, michans, rak ne oa ket nemeur gwelloc'h.

— Dizroet ha ne laret gir d'ei fenoz; klanv e, hag an taol-ze e c'halife lazan anei ive; warc'hoaz e vo gwelet petra vo d'ober.

(Da heuilh).

LAOUÏK.

Eur skouer vad hag a deu eus a berz uhel

Hon Tad Santel ar Pab na ankona ket ez eo ganst en eur vouc'h distar war ar maaz ha ne oa e dad hag e vam nemet hostizien. N'eo ket falvezet gantan lezel e c'hoarezed da gemeret dilhad e giz kear; koefiou o yaouankiz o deus dalc'het.

(Diwar ar Feiz ha Breiz).

Fentigellou

Diwarbenn an « Telegraf », mar plich

Eur c'houeriad a c'houlenne digant e amezeg:

— « Penôs 'ta, Yan, e labour an orjalen-ze? »

— « Penos? N'eo ket tenn, Jakez; pa groger en eur penn eus an nenden-orjal, ar penn all anezi a skriv egiz eur bluen! »

— « Mâ, mâ, n'oun ket evit entent mad a-walc'h penôs! »

— « Neuze 'ta, selaou, Jakez; eur c'hi ec'h eus? »

— « Ya, hag unan feal c'hoaz, Mindu e hano. »

— « Brâs eo? »

— « Etre bras ha bihan. »

— « Mad. Pa valez war e lost, petra 'ra? »

— « Harzal, sur a-walc'h! »

— « Ac'hanta, Jakez; Lakomp e vije da gi keit hag ac'han da Vrest. Ma valez war e lost aman, e benn a harzo e Brest. »

— « Sur a-walc'h avad. »

— « Mâ! Setu aze penôs e labour an orjalen, an « telegraf! »

Etre daou vicherour, war dachen Vrest

— « Petra ive eo ar « socialism » davad? »

— « Eas da entent, setu aman; eur gweneg a zo ganit; me 'm eus eur c'horn-butun; te bren eur gwenegad butun hag a ro anezan d'in. »

— « Ha goude? »

— « Me a vutun. »

— « Ha me? »

— « Te a skarzo da c'hourlanchen hag a spu! »

— « Mâ! neuze n'oun ket c'hoaz war ar pare da vont da « socialist! »

Eostik KERINEK.

BUEZUSDED HON GOUEN

Monumentchou lorc'hus ha koant ar Romaned, Gwaskerien koz hon gouen, emaint holl dispennet! Re hon tadou, avad, o fennou a zav c'hoaz, En peuc'h hon lanneier ken dinec'h ha biskoaz!

O yez, ar c'hoz latin, a zo, da virviken, Maro pell 'zo ivez en eur mor a anken!... Mez hon yez karet-ni, ar Brezoneg ken kaer, A zo komzet ato, en hon Breiz Izel ker!

Hep poan ebet erfin, an amzer 'zo bet trec'h, D'o spered argadus, daoust da nerz o divrec'h, D'o galloud, d'o ijin ha d'o c'halonder goue!

Trec'h e vo, memez tra, d'hon gwaskerien hirie, Ha dirak testeniou diskaret o brazder, Hon gouen a skedo c'hoaz, nerzus ha dibreder!...

MATHALIZ.

Divunadellou nevez

1^o Pion en deus digaset ar c'hiz d'ar merc'hed da zougen dilhad gweun da zever o eured?

2^o Pion a grad gallout esplika ha kompren pep tra?

3^o Petra 'vez leun en deiz a goull en noz?

4^o Perak, Perig e teus troc'het lost ar c'hi?

5^o Perak e leverer eo an den goloet henvel ouz ar wenannen?

RESPONT DA ZIVUNADELLOU

Kroaz ar Vretoned (kenta zul a viz Du 1908)

I

Ar c'hemener ho kwisk, a ra d'eoec'h dilhad, hag al laer ho tiwisk, o c'has gantan.

II

Ar c'henta eus eur vanden vugale n'eo ket peurvuia ar brava, rak seul vui ma koseer seul vui peurvuia e kollor kened, hag ar c'henta eo ar c'hosa.

III

An dud a fell d'ezo kaout bepred rezob, a zo peurliesha tud direzon.

IV

Ar bihana eus an holl stadou, eo Republik Tovalaro. N'eus nemet dion leo hed war tri c'hart leo ledauder he douarou. D'an deiz kenta eus ar bloaz ma n'he devoa nemet 168 a dud. Savet eo het er bloaz 1887. Ar merc'hed o deus gwir da roi o mouez evit henvel hep c'houec'h bloaz ar Prezidant.

Hema a ren aferien an enezen 'e-unan, hep kaout kuzuilherien ebet evit gouarn; mes ne ra lezen ebet hep goulen kuzul digant kement hini a zo er vro. An nep en defe c'hoant da welet ar vihana Republik, her c'havo en Europ, er gevret da enezen Corse, dem-dost d'ar Sardegn.

KELIER EUS AR BED-OLL

Seurt na weler ket. — Epad brezel ar Vende, breman 'zo tost da c'houec'h ugent vla, e timezas e Mirebeau daou vugel, ar pôtr c'houezek vla hag ar plac'h, a dimezas ive da c'houezek vla; da seitek vla he devoe eur verc'h; homan a dimezas ive da seitek vla ha da naontek vla, e c'hanas eur verc'h. Ar verc'h-man, da seitek vla, a dimezas hag he devoe eur verc'h da ugent. Dimezet da naontek vla, he devoe houman eur mab da ugent vla, eur mab an eus hirie seiz vla. Bean deus ive eur verc'h vihan. Setu eno eta peder mam; hogen, o feder int beo c'hoaz; oajet int a 84, 66, 46 ha 27 vla. An hini gosan a hall laret evellen d'he merc'h:

Ma merc'h, kerz ha lar d'az merc'h eman merc'h hec'h merc'h o ouelan.

Jubile an Tad Santel ar Pab. — Jubile an Tad Santel ar Pab a oa dilun en Rom. Bean oa en oferen, lavaret gantan, tremen tri c'chant eskob ha kardinal. Etouez ar pelerinajou a zo bet o welet ar Pab gant ar gouel-man, bean oa daou hag a reas d'ean kalz a blijadur; hini Trevis ha hini Mantoue, an eskoptiou 'lec'h ma oa bet gwechall beleg hag eskob. Meur a hini, etouez ar belerined, hag o devoa anaveet anean en e yaouankiz, a onele o welet en pe stad uhel, — uhelan hini 'zo war an douar, — e oa bet savet an hini o doa anaveet beleg distar.

Peziou monei nevez. — Elec'h ar peziou gwenneien ha daou wenneien a zo breman, ec'h eomp da gavet hep dale ar memes peziou kalz skanvoc'h ha bravoc'h, en aluminium.

Gwall-eur war ar vengleuzerien. — En ker Hamm (Westphali), tri-c'chant triugent a dud a zo bet devet pe mouget gant an tan kroget en eur vengleuz glaou-douar.

Endro da daou c'chant intanvez ha mil minor a zo gret gant an darvoud-man.

Ne oa ket bet ken gwaz-all biskoaz en Europ nemet hini Courrières.

Eun hunvre souezus. — Eur plac'h yaouank eus an Amerik, oajet a 19 vla, a welas eun noz en he c'houk he breur lazet gant eun all. He breur a oa o chom ugent leo diouti. He zud na rejont ket a van eus he hunvre; mes ar plac'h a c'houllas kelo eus he breur, ha setu e oa respontet d'ei e oa kollet. Neuze unan eus he breudeur a yeas ganti d'ei betek gwelet. Kavet e oa goullou; mes ar plac'h a gasas an dud hag ar polis betek ti an hini an evoa lazet he breur, hag a zizoloas e gorf plantet en klud ar yer.

He hunvre a oa bet gwir pen-da-ben.

Barn an Otro 'n eskob Kemper. — An otro Duparc, eskob Kemper, a zo bet dizammnet ha didamallet gant barner Poitie, 'vel ma oa bet gant hini an Oriant ha hini Roaou.

Bepred, ar gouarnamant 'n eus tapet e du war-nan, ha 'vit eun afer all hag a zelle ouz skolioù kristen an Oriant, eo bet kondaonet da 800 lur frêjou.

Er Chin. — Impalaerez ar Chin hag he mab, an impalaer, a zo marvet o-daou ar zun-all, ha n'eus bet tam ebet etreze.

KELIER EUS AR VRO

TREGER-GOELO-KERNE-UHEL

GWENGAMP. — An avalou. — Ken divalo e vale an avalou gant an tréniou, ma 'z eo fallaet eun tam war ar c'houvers.

Elec'h ugent real, n'eont ken nemet etre c'houezek ha triwec'h.

Ar memes prijou a werzer er Finister.

Soudarded-kanfarded! — Aboue ma eo digouezet soudarded ar bla-man en Gwengamp, ne ve ken klevet nemet drouk-komz ane; herve, bean 'zo hiniennou hag o deus dalc'het d'ober en Gwengamp ar vicher apach a rent en Pariz. Ar C'horr, devejer, a oa disul, da harter-noz, o lazant ar golerier en Traou-zre, pa goueas warnan eur bagad eus an hailhoned-man. Rei a rejont d'ean eul laz, ha goude e tec'hjont, o lezel anean astennet war an douar.

E keit se, ar polis a oa kousket mik, 'vel just.

Eun donézon gaer. — Eur c'helo mat evit merc'hed yaouank Gwengamp. Ar bla-man e tigoneo gante kaout ar mil skoed an evoa roet an otro Laurent de la Barre evit sikour pemp plac'h yaouank da zimezi. Bep a 200 skoed a vo roet da bemp plac'h eus Gwengamp oajet eus a 18 da 28 vla, ganet pe o chom dek vla so en kêr, a vad yac'h, hag anaveet dre o brud vat hag o onestiz.

Eur goulen o devo ar merc'hed yaouank d'ober er méri arôk an 10 a viz keidu. An 200 skoed na voint roet d'ar merc'hed o devo ar prijou, nemet an de ma timezfout, hag e vo red d'e bean dimezet 'benn an de kentan a viz c'houevrer 1910.

ROSTREN. — Ermeaz a vér. — An otro Henry, m'êr Rostren, a ro an dilez eus e garg.

Herve, ne oa ket 'vit arrount da skoulman, gant an dispignou re vras an evoa gret war hano ar barouz.

Al laer. — Al laer a c'hoari e boîtr en koste Plougerneve ha Kergrist-Moelou.

En Keroden, 'n eus kaset gantan eur yalc'h; en Kerbanel-bihan, 'n eus torret an nor war eun ti.

— Deomp bepred, eme al laer; brao eo hale; ar gouarnamant a zo a-du ganimp!

SANT-NIKOLAS. — Tan-gwall. — Dimer-c'her eo bet kroget an tan en ti Charlez, labourer en Kerbrun. C'houec'h kant lur goll a zo; mes ar perc'hen a oa asuret.

Dec'h c'hoaz, dec'h diwean her gweliz,
Buezek tre, Mikel Morin,
Wardro c'huec'h eur eus ar mintin,
Oc'h en em bourmen goustadig,
En aleon eus e liorzic ;
Edo oc'h ober eur regal,
Gant eun tronsad bara segal,
Ha warnan en devoa ledet,
Eur gwiskad kignen hed-a-hed ;
Ken kalonek mat en debré,
Ha ma tebrfec'h eun tam paste,
A hini an aman teuzet
A gouezfe war ho pizied.
P'am gwelas o vont er jardin,
En em lakeas da vous'harzin.
— « Ac'hanta, Dom Yan, emeza,
Ha n'eo ket 'vellen 'tleur beva ? »
— Te oa drol, Morin, koulskoude,
'Vit d'it gónt farsal a zoare !
Nan, nan, jarnigoa ! M'hen atest,
Ar maro n'eo ket den onest,
Hag e gronga a gavfen mat,
Hep respet d'ei na d'ean oad !...
Piou, en divije lavaret,
O kaout an eur-vad d'az kwelet,
O tjunia dispar, Mikel,
E llejes birviken mervel ? !
Gwir eo sur, den n'hal lavarje ;
Maro-mik ez out koulskoude ;
N'ho kwelimp mui mil birviken :
Pebez koll d'omp ! Pebez anken !
Evit gwir, m'her goulou ouzoc'h ?
Piou a lakaio brall er c'hloc'h ?
Piou a zervicho 'n oferen ?
Piou a ray tout hiviziken ?

MOUSKOUL.

EUN' ESKOB DIRAK AR VARNERIEN

Bet 'zo amzer c'hoaz hag e vije gwelet an eskibien o vont dirak ar varnerien. Kentan ma oa an Iliz o sevel, goude barnedigez ha maro Hon Salver, ne vije gwelet ken dirak ar varnerien nemet kristenien, beleien, eskibien, ha, zoken, ar Pabed a-wechou.

Divezatoc'h, ze zo bet gwelet c'hoaz, ken lies gwech 'vel ma teue a-benn an droug da dapout e du war ar vad. En hon amzer, aboue an de ma eo deut ar Revolution « diaoulek » da gemer he c'hrenv ha da ren war ar Frans, e tro 'pad kant vla, peder gwech breman eo 'n em gavet ar relijion gwasket hag ar bastored ha pennou an Iliz galvet dirak ar varnerien, war bouez koll pe o bue, pe o liberte, pe lod eus o feadra.

Spered ar Revolution a zo 'n em zilet el lezenou hag en kalonou kalz a dud, ha ze zo kaoz n'eo ket bet ar Frans, kant vla so, ya'c'h-a-walc'h ouz ar relijion. Ze zo kaoz ive, a vare da vare, e weler menech, beleien hag eskibien laket en renk an dorfetourien ha digaset dirak al lezvarn, elec'h m'eo azeet lezen ar Revolution evit o barn hag o c'hondaoni.

Diwean hini 'zo bet eo eun eskob breton, an otro Duparc, eskob Kemper. An enor-ze oa dleet da Vreiz-Izel ha d'on otro Duparc, heritour sant Caourantin, ha pastor an eskopti ar muian breton a eskoptiou Breiz.

N'e ket souezus mar zo bet kavet si en otro Duparc, rak hen an evoa diskoneet, da gentan, e kave si en lezen ar franmasoned.

D'ar c'houlz-se e oa c'hoaz person en Oriant, bla bet a zo aboue an 21 a viz here. An de-se e oe galvet, evit ar wech kentan, dirak lezvarn an Oriant. Petra 'n evoa gret ? Eun dra bennak dreist a vad, a dra zur, rak hirio eo skrivet en penn al lezen : ar fallan ar gwella hag ar gwella ar fallan.

Pa oa bet lakat madou ar c'honenchon en gwerz en Oriant, hen, ar person, a reas stagan war ar magorion paperou da rei well da c'hout d'an holl e oa eskumunget gant lezen an Iliz piou bennak a zentje ouz lezen ar gouarnamant, 'n eur vont da brenan kalz pe nebeut ens ar madou laeret gantan. Ar gouarnamant a gasas paper d'eur beleg ken dispont. Mes ar varnerien na gavjont si ebet er pez en devoa gret hag e lezas da vont. Ar gouarnamant a gasas an afer dirak lezvarn Roaon. En Roaon, ar varnerien na gavjont ive netra da damall, hag an otro Duparc a deuas adarre d'ar gér. Ar gouarnamant hen galvas neuze da Bariz.

En Pariz, ar gouarnamant a zo mestra n'e ket ar Justis. Lezvarn vras Pariz a dorras barn an Oriant ha hini Roaon, hag a gasas an Otro 'n eskob Duparc da Boitie. Ze oa en miz even diwean ; 'benn neuze oa bet hanvet eskob en Kemper. Kasoni ar franmasoned eneb d'ar beleg kalonek-se an evoa roet da c'hout d'ar Pab e oa ennan danve eun Eskob, ha keit ma oa ar gouarnamant kas ober dismegans d'ean, ar Pab hen kurunas hag a lakas war e benn ar mintir aour. Digare ouспен evit ar franmasoned da gouarnari. Arók, n'o devoa nemet eur person etre o daonarn, breman o devoa eun eskob : kaeroc'h tol a oa d'ober o kondaoni anean.

Setu eta an otro Duparc, ar zun-all, en Poitie, dirak e beved barnier. E gomzou 'zo da vean miret ha diskleriet, rak bean int henvel ouz ar re gaeran a zo bet klevet biskoaz war vuzellou an eskibien vras a zo bet brudet dre an Iliz ha dre o bro.

— « Otro barnier, eme an eskob, en eur ober ar pez am eus gret, ne oa ket ma zonz gant lezenou an dud ; sellet am eus petra 'm oa d'ober, herve ma c'harg, hag em eus han gret. Gwelet em eus e oa ma farousianiz e danjer da gouean en eur pec'hed grevus ; hag am eus roet d'e da c'hout en pesort pal e oant. N'hallen ket, herve ma c'honsians, ober a-hend-all. Kemend-all a weler hag a vo gwelet bemde en Frans, keit ma vo eskibien ha beleien karg d'e a ineou, ha keit ma tevio lezen an dud da zorc'henni ane da bec'h eneb lezen Doue, war ar pez eo dleet d'imp difenn. N'e ket dre hon deus dismegans auz al lezenou sivil ; mes ar pez a zo c'hoarvezet an dro-man na zell ket ane. C'houi c'houl ganimp tevel, n'hallomp ket ober. Tevel a vije memes tra 'vel mont eneb hon fe. Gwell eo ganimp c'hoaz bean skoet gant lezen an dud. »

Ar barnier. — Neuze ne ret van ebet ouz al lezen ?

An eskob. — Bean 'zo lezen ha lezen. 'Vidonne a zent ouz lezen Doue. Gwaz aze ma 'n em gav an eil eneb eben. Koulskoude, n'on ket eun den aheurtet ; na dec'hin ket, mar ben skoet. Galvet ouz bet ganac'h dirak ho lezvarn. Deut on, hag eus a-bell, ha n'e ket eur wech, mes lies a hini. Marteze e refet d'in fréjou ; marteze am lakfet er prizon. Ne zonzjan ket kemer an tec'h. Mes 'vit pez a zell rei dorn d'eur lezen eneb ma c'honsians, 'n eur devel pa oa dleet d'in komz, an dra-ze n'hallen ket ober.

Setu eno komzou hag a lako lorc'h en kalon pep kristen ha pep Breton.

Ar barnier, diwar ze, a gemeras eiz de 'vit ober e zonz !

A hed an noz

Tón : A hed an noz.

D'am merc'h Mari.

Bez dizaon ma ve trubuilhet
Da hun en noz,
N'eus oabl du hep ne ve stered
O para 'n noz.
Arc'hoaz 'tevio al levenez,
Ar spi o c'hoarzin d'ar vuez,
En despet d'ar boan, d'an enkreuz,
Da wask en noz.

Tro d'az kwele elez dinam,
A hed an noz,
'Vir gant preder da hun divlam,
A hed an noz,
Ha pell diouzit kwit e kasfont
Pep fall, pep danjer ha pep spont,
Pep drouk-el, a red divergont
A hed an noz.

GWELTAS.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

Peziou neve gant DIR-NA-DOR

POTR E VRAGOÙ BERR -- TOG JANI

(ar pez-man bet d'ean an eil priz en Plougastel).

Peziou gret, an hini kentan, evit pòtred yaouank pe krennarded, an eil evit merc'hedigou.

Al levrig : 5 kwanneg, 6 gwenneg dre ar post.

Ar re a gemero meur a hini, 'vo gret d'e disken priz.

Setu aman peziou berr hag ezet da c'hoari ; n'eus ket ezom a wiskamanchou kaer na koust ebet 'vit o c'hoari. A hendall eun dra beo int, fentus ha skouerius war an dro.

Breman, epad ar goanv, er patronajou hag etouez ar vugale hag an dud yaouank, eman ar gwella koulz da zeski peziou hag a rey dudi ha plijadur kement o gwelo.

Perak ne gavfer ket pòtred yaouank hag 'n em glevfe etreze da zeski peziou evel ar re-man, re Klaoda ha re Dir-Na-Dor, ha d'o c'hoari er parouziou ?

O digoll o defe, ha vad a rafent d'e o-unan ha d'ar re-all.

Memes tra, ar merc'hed bihan a hall deski ezet bras eur pezig evel *Tog Jani*, gret ispisial evite, eur pezig fentus hag ennan eur gentel c'houek.

'Vit c'hoari ar pez-man, petra 'zo ezom ?

Peder blac'h vihan, eur banerad pilhou, tri pe bevar dog plac'hed, eur boned hag eur mezellour, ha netra ken.

'Vit c'hoari *Potr e vragoù berr*, eur c'hoz vrageou, eur gezel, eul letern, diou pe der skudel hag eur gwiskamant paket 'n eur doubier.

'Vit c'hoari *ar Mevel laer*, n'eus ezom nemet daou bótr, ha netra ken.

Ar gwiskamanchou, er peziou-man, a zo holl 'vel war ar meaz.

Hastomp eta prenan ar peziou neve, ha d'al labour raktal, *ma tevio pep parouz da gát he strollad c'hoarierien ha c'hoarierezed, hag eun tam diduamant eur wech an amser d'ar zul.*

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paean eiz gwenneg dre vit nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement assurans a zo, assurans tan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherourien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri matez pe mevel, pe tud impliet dindanan a dle kas kelo da E. AR MOAL, 27, bali Charnér, Sant-Briek.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou en aroudissamant Gwengamp.

Da gaout **GWIN MAT HA RIE** skrivet
22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da **Pierre LE BRAZ**

eur Breizad a-werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiu
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN C

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
= skoed evit ar broioù estren hag evit ar Broioù helltiek.

RÉSERVÉES :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMBAÑNOU-KONVERZ HA
KOMMANACHOU

An Aotrou TONNELIER, 27, bali Charner, a zigemer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Franz An Guiz.
Gant brezonek eo douar ar feiz.
Gant ar gallok ez bio a Vreiz.
Fenez An Guiz.

Dalc'hit hepred d'ho prezeg
Vez an dud vad ha kabonek.
Yez ar feiz eo ; ma vo treset,
Ouspenn ar Vez, e ve Pa'he'di
Muz.

GOUELIOU BREZONEK

Tog Jani a vo c'hoariet en Plouneve-Kintin,
gant gouelioù Nedelec, en ti-skol kristen ar mer-
c'hed.

Tog Jani ha Pôtr e vragoù berr, o daou, dre
ar post, c'houec'h gweñneg.

LODENNOU BREURIEZ AR BREZONEK

En gouel Prat diwean, Yves Bercot, eus Duault,
ha Joseph Boucher, eus Plounez, o doa goneet bep
a loden, Kaset voint d'e ar zun-man.

OFEREN " BREURIEZ AR BREZONEK "

Bep pevar miz, Breuriez ar Brezonek a lak
eun oferen evit ar vugale, o c'herent hag ar re a ro
zikour d'ar Vreuriez.

An drede a viz kerdu, de ouel sant Fransez-
Xavier, e vo lavaret, en Prat, diwean oferen ar
bla-man. Mat a vije d'an holl vugale ober, an
de-se, evel ma ray re Brat, — re an eil ha teude
Pask, — koveseat ha komunan, « evit goulenn
digant Doue ma vo gret, dre ar vreuriezig, eur
vad bennak d'e ha da Vreiz-Izel.

N'ouzon ket hag-en e ve pedet nemeur, etouez
ar Vretoned, evit Breiz-Izel. Bugale Breuriez ar
Brezonek a dlefe, da vihanau, laret bemde eur
bater evit o Bro.

Gwech ha gwech-all, e klevan ar gir-man :

— Kredi ra d'ac'h e tevio Breiz-Izel da hadve-
van, ya'c'h ha bloc'h, evel gwechall ?

Ya, dont a rei, nemet, evit se, e zo daou dra
d'ober : labourat eviti ha pedi eviti.

MOUEZ AR FRANKIZ

Piou a c'halla birviken lavaret an dizurz hag
an dismantrou hadet en hon Bro gant lezennou
fall hon gouarnourien digaleo ! Mouez piou a hallo
birviken sevel krenv hag uhel a-walc'h evit dihun
eur bobl kousket ha dizeblant !

Pegwir na kazetennou, na prezegennou, na
skouer abed n'o deus gallet betek breman tenan
digant ar bobl an disteran klemmaden, zon bras
am eus ne vefe doru Doue o dalta ar bobl ze, bet
ken digalon en kenver e Vestr a gargas anezan
koulskoude a gement a vadelezou...

Evidomp-ni, ken kustam da wetet ha da c'hou-
zantv ar fall, ma seblantomp bevan gantan en
amezegez vad, n'hon deus mui a galon. Kemer a
reomp ar fall evel eur mestr, an dizurz evel eul
lezen, ha doujus evel denved, e plegomp hon fen-
non, hep sonjal ez omp kristenien hag e theomp
muioch da Zoue eget d'an dud.

Evelse, tam ha tam, ez omp deut yen, ez omp
deut klouar... Mouez ar Frankiz n'he deus krog
abad warnomp, mouez al lealdad a ra d'imp ober
eur c'hruz d'hon diousoa ; mar na garomp diwall,
e teufomp hepdale dinerz a-walc'h evit lipat dorn
hon gwaskerien, goude bezan gwerzet d'e hon
brud vad, hon furnez...

Gwellat skouer, koulskoude, na den ket d'imp
war an avel-vor abeurz hon breudeur karet, Bre-
toned Sant-Per-Mikelon !

Ar skouer a zo muioch eur gentel, petra laran ?
eur c'halvaden, a den d'imp seul glemmusoc'h ma
'z eo mouez ar frankiz gwasket !

Ah ! ya, ar frankiz gwasket !... Rak, ma 'z eo
poanius d'imp-ni, Bretoned ha Fransijen, gou-
zantv en hon bro pouez ha grevusted al lezennou
fall, pegement n'eo ket poaniusoc'h d'hon breu-
deur a vev pell diouz ar Franz, o Mam-Bro, gwe-
let o Mam o tont dirak daoulagad an estren, da
ziframma digante pep liberte ha d'ober d'e plêga
da lezennou ha na vent ket groet d'an dud goue
zoken.

Petra, a c'houlent diganin, lennerien ger, a
c'hoarve eta er vro yen-ze elec'h ma 'z a bep bla
hon fesketerien, en bro Sant-Per-Mikelon ? Setu
aman :

Kenkoulz hag en hon Bro, al lezen enep d'ar
skolioù kristen a bouezas war enezen Sant-Per.
Skol gristen Sant-Per-Mikelon a oe serrat er bla-
vez 1904, goude bezan houtet emaez ar « frered » a
oa o terc'hel anei.

Neuze e oe bet eun tammig trouz. Mes ar bobl
a c'houzanvas serridigez e skol eur pennad, o
sonjal gallout goude addigeri eur skol gristen-
all, renet en dro-man, gant mestrou-skol kristen,
a dra zur, mes hep bezan frered. Ar skol neve a
oe digoret, pegwir al lezen a lez digeri skolioù
gant ne vo ket ennê na frered, na seurezed eus ar
skolioù koz.

Mes Gouarnour an enezen, evel eur mevel dou-
jus d'hon gouarnamant dife, a harzas digeri ar
skol. Ar bobl he digoras bepred, ha tremen eiz
de aboue dimeurz, daou vestr-skol ar skol gristen
a oa kondaonet gant lez-varn Sant-Per-Mike-
lon da bep a vil lur frêjou. Ar varnedigez a gou-
naras ar bobl, hag, a-boan gouveet ar c'helo, eur
milier a dud, a dadou hag a vammou, a reas tro
Sant-Per en eur c'houlenn frankiz, frankiz !

Herve klevet ar journalou, ar bobl a reas tro
ker en eur dispaka banniel ar Stadoù-Unanet
(Etats-Unis), o tiskouet dre eno e kave welloc'h
— mar ne c'houlle ket ar Franz rei liberte d'ezan
— bezan dindan domani an Amerik, elec'h m'o
deus an holl frankiz da zavel o bugale ha da vev
en peuc'h.

Eun dra vezus evit eur vro eo gwelet he saji-
di o karout welloc'h eur vro estren, mes meznoc'h
eo c'hoaz d'eur vro nac'h ouz he bugale kement
liberte a zo. Araok an tól-man, tud an enezen o
doa holl gouleunet dre 1.500 sin kaset da Bariz,
ma vije lezet gante o skolioù kristen hag o fran-
kiz.

An aotrone *Pemb mil shoed* na rejont van abed ;
pell ac'haue, kas a rejont er c'hontrol eur Gouar-
nour hag an eus groet eus e wellan evit peur-
gounnari ar bobl.

Ar muzul a zo barr. Ar bobl kounnaret a c'houll
frankiz hag, en desped d'ar Gouarnamant, e fell
d'ezan kavout evit e vugale eur gelennadurez kris-
ten.

Ar Gouarnamant 'zo nec'het... karout a rafe
ober da dud Sant-Per-Mikelon plega pe derri.
Koulskoude, herve ar c'heleier diwean, e vo groet
eun enklask war ar pezh a zo tremenet en Sant-
Per-Mikelon. Da c'hortoz, e zo kaset di daou lestr
a vrezel ha, marvad, dirak c'hoant ar bobl, ar
Gouarnamant eo a blego.

Mezus eo, memez tra, e ve eun dornad fran-
masoned a waske eur vro ken karet hag hon hini...
Poanius eo sonjal e renk hon breudeur en Sant-
Per-Mikelon 'n em sevel hag ober trouz evit ka-

vout digant eur zehlant a c'houarnamant, al li-
berte zska a den d'an tad a-beurz Doue, al liberte
da zavel e grouadur herve e greden.

N'eo ket hepken en Franz, al lezennou diskiant
a wask ac'hanomp a wask hon c'holonion kement
ma teu hon sujidi da deurel eur zell a drue war
ar broioù estren, elec'h ma reu ar Frankiz evit an
holl !

Al lezennou diskiant a zismantr hag a draill,
en diavez, an oberou kaer savet gant hon misio-
nerien, ha ze, evit plijout d'eun toullad lamponed.
Daouste pegouls, evelkent, e tihuno ar bobl ?
Pegouls e kemero skouer war botred Sant-Per-
Mikelon hag e lavaro n'eo ar frankiz da den, al
liberte a zo d'an holl !

An de-se ni a vezo mestr en hon Bro... Mes
araok e fello d'imp, da gentan, diski difenn frankiz
ar Wirione, ma reno dre-holl lezen Doue ! P'hon
devo hadkavet Doue, p'hon devo disket dizrei
d'Ezan adarre. Hen ive d'e dro a roio d'imp pep
frankiz ; rak frankiz an den n'hall bezan dishual
keit ma ve disprizet Doue !

Groeoamp neuze hon *meâ culpâ* hag elec'h hir-
voudi, elec'h damanti, savomp hon fennou...
Mouez ar frankiz hon galv ; ineou hon bugale 'zo
gwasket... An nerz a zo ganimp, pa garfomp, e
trech'fomp !

AR YEODET.

P. S. — Lennerien *Kroaz ar Vretoned* a oar
holl eman enezennou an Douar-Neve stok ouz ar
C'hanada ha ken tost-all ouz ar Stadoù-Unanet
(Etats-Unis).

An enezennou-ze a zo d'ar Franz hag an darn-
vuian eus o fobl a zo Bretoned ha tud eus koste
Bourdel ha Bayonn ; kristenien vat hag a lar,
pegwir e paeont truañchou ha kar, ez eo dleet d'e
ive kavout liberte da gas o bugale d'ar skol a
garfont.

Hepdale e vo studiet ebarz ar Gambr trubuilhou
Sant-Per-Mikelon.

BREURIEZ AR BREZONEK

Kreski a ra bepred Breuriez ar Brezonek. Ar
zun-man, Calanhel a digas 10 bugel oupenn d'ar
Vreuriezh ha Plouneve-Moedec a digas 31.

Gant se, setu aman hieman doare ar Vreuriezh
dre barouz :

Berlevene,	1	Plijidi,	19
Carnoet,	10	Pludual,	1
Plusquellec,	1	Plouber,	11
Poullaouen (Finist.)	1	Lanvon,	3
Coatrevén,	1	Louanec,	1
Cavan,	1	Ploulec'h,	1
Calanhel,	10	Caouennec,	1
Duault,	1	Plistin,	1
Goudelin,	1	Plouneve-Moedec,	31
Kermaria,	19	Sant-Jili-Plijo,	1
Loc-Eguiner (Finist.)	3	Sant-Norgant,	3
Lanviliin,	6	Sant-Agathon,	5
Plouagór,	5	Sant-Servez,	3
Pleuvian,	2	Lomikel-an-Trez,	5
Peurit,	22	Trezélan,	3
Prat,	36	Trabriant,	1
Plougonver,	2	Tredrez,	2
Pleuveur-Bodou,	23	Trégrom,	10
Plounez,	1	Yvias,	1
Plounerin,	9		

Ze ra, kontet, 258 bugel, etre 39 parouz, o
kemer *Kroaz ar Vretoned* 'vit 8 real ar bla, o
teski ganti lenn ha skrivan ar brezonek, evit
gallout evelse didui ha kelen tud o zi hag o

AR MIZIOU DU

Setu mizioù du ! An amzer he deus great hent : an nevez-amzer n'ema mui gant e vokedou koant hag e c'hlaizennou ; an hanv a zo tremen gant e heol tom, e barkadou ed alaouret ; avel an diskar-amzer a c'houez hag an deliou er gwez a zeu da c'hoenvi, da veleni ha da goueza d'an douar. Ar wezen ar gwella gwirizennet en douar a wel he mantel velen o vont diganti tam ha tammig betek ma vezo lakeet e noaz gant an avel-viz o c'houeza dalc'hamat. An oabl glas a guz e liou kaer dindan goabrennou loued, eur vrumen yen a astenn eur vantel a gaou war an douar a-bez, avel an hanter-noz a ro da glevet eur vouez klemmus evel eun ene e poan, an evned n'o deus mui na zon na ton : pep tra a zeblant mervel dre ar bed ! Eur vouez a zav uhel evit roi d'an den kentel, monez ar gwez diframmet diganto o deliou melen hag a weler brema breset dindan seuliou ar beachour, kaset ha digaset er pevar avel !

O den ! setu aze skeuden da vuez. Evit meur a hini, n'eus ket gwall-bell c'hoaz, e oa an nevez-amzer : kaer ha d'indus edoc'h da welet en ho yaouankiz. Ho taoulagad lem ha skedus, ho sellou laouen ha leun a vuez, ho trem fresk e liou ar roz, hoc'h izili soubi ha nerzus, ho pale skanv ha buan, pep tra ennoc'h a ziskoueze ar vuez en he c'haera. Mes setu tremen evidoc'h an nevez-amzer, ar gwella amzer eus ho puez : tost ed d'eo'c'h ar poent da veza e-kreiz ho prud ; bremaik en em gavo an diskar, an amzer ma ternaout mont war goll betek ma 'n em gavo ganeoc'h ar gwall-amzer eus ar gozni, ar gwall-eur eus ar maro. C'hoaz eun nebeut derveziou hag evel an deliou-ze a welez gant tristidigez o koueza eus ar gwez a ree dudi d'ar geraden, o den ! te gouezo dindan falc'h ar maro !

Evit lod eus an dud ne vije ket bet ken gwaz, ma ne vije bet netra goude ar maro ; mes n'eo ket penn-da-benn ar memes tra eus an den ha ma 'z eo eus an delien diskaret diwar brank ar wezen. An holl her goar, en hevelep doare ma n'eo red da zen hel lavaret. Krouer pep tra en deus lakeet e kalon pep den ar c'hoant da veva goude ar vuez-ma, da veva atao. An den ouспен m'en deus eur c'horf, en deus eun ene krouet ouz henveledigez eun Doue peurbadus, eur spered ha na dle evel Doue kaout divez ebet.

Eun dra eus an talvoudka eo d'an den sonjal e tierra bemdez an amzer en deus da tremen er bed-man. Evel an delien ne zalc'h d'ar vuez nemet dre eun nebeudik tra, dre eun neuden dister a zeu da derri ker buan dre an distera bar-terzien. Seblantout a hell d'an den eo hir-amzer ar vuez war an douar ; padal ez eo herr-berr e gwirionez ar vuez ar badusa. Hor buez he devezo bet fin a-benn ma vezo kaset hor c'horf d'an douar da vreina, da vaga ar prevned, mes hon ene na dle biken mervel, a stago neuze gant eur vuez all hag a bado da viken. Ma fell d'eo'omp beva evel m'hen desk d'eo'omp hor skiant vad, ar gwir furnez, e lasomp hon holl sonjoù tresek ar vuez da zont, a zo ar gwir vuez evit an den ; hor c'henta youl, hep damanti, a dle beza d'en em gaout mad goude ar vuez-ma : beva eurus da viken.

Pa gouez eun delien eus ar wezen, e lavarit eo echu ganti, n'eus mui netra d'ober eus ar pez a ra an delien er wezen ; n'eus mui da gaeraat ar wezen, da yac'haat an ear, da c'houderi ho ti, ho tourarou, na da zudia ho taoulagad ; mont a ra da vreina el leac'h ma hi c'haso ho torn pe an avel. Mes pa gouezo ho korf e breinadurez ha pa 'z ay hoc'h ene dirak Doue, petra deut da veza ma n'ho peus ket groet ar pez a dliac'h da ober ? En em gavet dirak ho parner, pe seurt tra vad ho pezo, ma n'ho peus da lakat dirazan eun ene kaeraet dre an oberiou mat, dre hoc'h aket da heuilh ar relijion, d'ober an dleadou eus ho stad ?

O ! sonjoù alies e kement-ma, dreist-holl d'ar mare-ma eus ar bloaz ma welomp an deliou o koueza eus ar gwez ha ma o bresomp dindan hon treid. Pep devez, pep bloavez dreist-holl hon distag nebeut a nebeut diouz ar vuez-ma hag hou tosta muioc'h-mui ouz ar beurbadelez ; en eun tren hent-houarn emaoomp hag hor c'has trezek ar beurbadelez gant muioc'h a herr eget an tren

buana a ya da Bariz. Eus an tren-ze ha ne velit ket o tremen dirazoc'h pep tra : nerz, yaouankiz ha kened ! A-barz pell meur a hini ac'hanomp a vezo e penn e veach, arok zoken ma vezo kouezet an delien diweza eus ar gwez.

Lenner, va mign'ou, pa zeuy an eur d'eo'c'h da veza diskaret war hent ar vuez evel an delien diouz brank ar wezen en diskar-amzer, ra hellot lavaret ho peus graet ar pez a oa en ho tlead, hag en hano ar frouez mad eus eur vuez santel ho pezo pinvidikaet ganti hoc'h ene, ra viot kavet dellezek da veza er glour a bado da virviken !

KATOLI.

SUL AN ANAON

Lenner ar werz kaer-man savet gant *Pen-Breton* :

Kroaz ar Vretoned n'halle ket tremen hep sevel he mouez evit gouelan war an dismegans hep he far gret d'an Anaon. Rak an tol an eus gret gouarnamant Frans o laerez an Anaon, 'n eus bet biskoaz e bar war an douar, evel n'eo bet biskoaz gwelet ar pez 'zo bet gwelet en Frans disul : an Iliz en kavou o pedi 'vit an Anaon laeret. Pebez tolen ! An Iliz laeret he-unan o pedi 'vit ar re vev hag ar re varo, betek fin ar bed.

Klevet 'vo c'hoaz tud o laret : « Ar veleien ? Tud a arc'hant ! » Mes uheloc'h 'vit monez an dud sod, eur vouez a zavas disul dre holl, en ilizou Frans, pa oa ouz an ôter ar beleg laeret o pedi 'vit an Anaon laeret, hag ar vouez-ze a lavare :

« An dud a arc'hant eo ar re a laeras ! C'houi oar, kristenien, pelec'h eo et an arc'hant ! »

Hirvoudou an Ine kristen o sonjal en Anaon kez laeret

War don : *Ele eus ar Baradoz.*

O ma bro muian-karet, Frans, gwechall bro ar zent, Perak ec'h oc'h ken kontrol, pa zentec'h diagent ; Perak bezan treitoureuz d'ho kwellan bugale, Betek o laerez, zoken, pau int et gant Doue ? ...

Hag evelse e kredet, gwaskerien ineou. Ober fae war an urzoù gret d'imp gant hon Tadou ? — « Pedet ha laket pedi, — setu o zestamant, — « Lezel reomp gant an Iliz, hon douar, hon arc'hant. »

Hag en tan ar pugator, hon c'herent kez en poan, Gant ar zakrifis santel a c'hortoe distan ; Rak evite gwad Jezuz an eus eur priz hep par : Eur priz ha n'hell ket kompreu sperejou an douar.

Mes gwasoc'h evit bleidi, er c'hoajou o yudal, Kreiz an dag, ar jolori, ez eo deut ar re fall, Gant o c'hrabanou hudur da laerez an Anaon : — Pa zonzan en o zorfed, frailh eunon ma c'halon !

Hag evel oanedigou, dija hanter-daget. Dirak eun dra ken euzus, ec'h omp chomet batet ; Evrus c'hoaz neb n'an eus ket roet dorn da zikour, Pe hadlaket ar « Pouvoir » en daouarn tud treitour,

Mes siouz ! ... kalz ac'hanomp, marteze hep zonzal, Pe dre doujans 'vit an dud, a zo bet troet fall ; Neb a dalc'h ar zac'h d'al laer, den onest nan eo ken : Anaon kez, pardonet d'imp, ni zo kaoz d'ho anken !

Ya, ni dre hon gwall-vue, ni hon deus meritet Ar gwall-eur hag ar c'hasti 'zo war hon bro kouezet, Doue bermetas d'an diaoul gwaskan Job, an den [mad ; Skoomp war bouli hon c'halon, dousoc'h e vo hon [stad.

Ar bugel, pa ve gwasket, c'houli zikour gant e vam, Hon ine paour 'zo brevet, ken pouner eo he zamm ; N'omp ket evit repara ar gaou a zo bet gret Ouz an Anaon o leski, an Ineou karet ! ...

O Iliz Santel, mamm vat, mamm dous d'ho pугale, C'houli lak ho tilhad kavou d'ar zul, devez Doue ! Eun dra ken gwelabl 'velkent denero hon c'halon, Ha ganac'h ni a bedo 'vit ar paourkez Anaon.

Eur gentel ken dous, ken fur, a ra d'hon tal ruan, Mes warni e par, kerkent, an esper ar vrasan ; Pa vo gwirion hon glac'har, Doue madeleuzus A distolo diwarnomp ar gwall-euriou spontus.

Ha neuze, o Anaon ker, ar Frans gwelloc'h renet A rento c'hoaz d'an Iliz ar madou d'ac'h laeret ; Neuze, gwad sakr ma Jezuz redo war hon ine, Diragoc'h tigor frank dorjoù splan an Ne.

Da c'hortoz, renkomp pedi, startoc'h evit biskoaz ; Mar ped ganimp an Iliz, gwelloc'h e vezo c'hoaz ; — « O Gwerc'hez Vari, ma Mamm, m'ho ped, [bezet evour,

« Da zilivran an Anaon eus tan ar Purgator ! » PEN-BRETON.

D'EUL "LENNEREZ GOZ"

« Tro eur plac'h yaouank en Pariz » bet war unan eus hon niverennou diwean, an eus bet anwazet eul « lenneraz goz » hag a skriv d'imp d'hon fedi ne lakan ket ken artiklo evel an hini, emei, hon doa bet ar « fantazi da skrivan ar zun diwean », rak « bean 'zo kalz a blac'hed fur en hostalirioù, bet savet gant tud vat ha desket er c'houenchou. » Ha neuze « an dud o deus c'hoant da 'n em derc'hel ervad a 'n em dalc'h dre holl, n'eus forz en pesort pieg hag en pe lec'h en em gavont. »

War ze, kentan tra da laret eo hon deus keun bras da vean poaniet hon « lenneraz goz ». A dra zur, bean 'zo hostalirioù dalc'het mat. N'hon deus biskoaz laret ne oa ket. Mes laret hon deus penos, hirie, dre ma teu an dud da vean muioc'h digabestr 'vit biskoaz, eo dije sevel bugale, 'vel 'zo dleet, en eun hostaliri. Hon lenneraz a asant gant se, pa lar e zo en hostalirioù mervel fur bet desket er c'houenchou. Hini G... , ma vije bet desket en eur gouent, a vije bet ive, sur a-walc'h, eur plac'h 'vel 'zo dleet. N'houllfen ket laret, koulskoude, penos an hostaliri a goll an holl verc'hed bet savet eun adalek o bugale ; mes ne gredan ket ive e ve gwir penos an dud o deus c'hoant da 'n em derc'hel ervad a 'n em dalc'h ervad dre holl ha dalc'hamad. N'e ket mat, war digare ver kalet, c'hoari gant an tan. Gwelloc'h eo bet dalc'hamad, hag e vo, eun ti labourer, war ar meaz, da zavel ha da vagan bugale, 'vit eun hostaliri.

C'houi laro : An holl n'hallont ket bevan war ar meaz ! Nan ! Mes nag a hostiz a anavean-me, — ha laret an eus d'e, — hag o dije gallet bean labourerien vat war ar meaz !

Ma tigoù ganimp komz gwech-ha-gwech eus an hostalirioù, eo dre ma zo red lies a dol morzot 'vit skei eun tach.

Mes bepred *Interest ar Vro* eo ar pez hepken a doug ac'hanomp, hag interest ar vro eo ma vo bepred mui-ouz-mui a labourerien, a hortizanted, ha nebeutoc'h a hostizien.

KONTADEN YAN

EUN DEVEZ A DRUBUILH

'Ben oa aet eur pennad gant an hent ec'h aruas eur plac'h yaouank gantan.

— « Da belec'h out o vont, ma fôtr, ken diweat ? »

— « D'ar ger, emean. »

— « Hag e teus pell d'ober ? »

— « Betek Kergowen. »

— « Deus dumen fenoz hag ac'hoaz ar beure ec'h i d'ar ger. »

Mont a reas gant ar flac'h yaouank. Houman na oa nemet he mam ha hi o chom en eun ti bihan pell diouz an hent bras. Pan aruas an daou-man en ti, se oa na tan na golo. Kenkent an hini goz e reas tan, an hini yaouank a droc'has soup diwar dorz ar paourkez Yan, rak ne oa tam bara eno nemetan.

Gret he devoa ter skudellad, unan vihan, unan gren, hag unan vras. Pa oent trempet, e laras an hini goz : « Aman, emei, eman 'r c'hiz, pa ve gret koan, da lampat dreist an treuzou. D'an hini a lam ar pellan, e ve ar skudellad vras, ha d'an ei

an hini gren ha d'an drived an hini vihanan. »
 An hini goz a lampas, da gentan, kichen en treuzou; he merc'h a lampas eun tammig pelloc'h. Yan a zante banden e vragon o loskaat 'ben neuze, hag e sonje 'barz ar skudellad vras. Ober reas eul lam kals pelloc'h 'vit an diou blac'h, mes 'ben e tistroas, e oa serret an nor outan.
 Setu ar paourkez Yan red d'ean mont war rôk adarre, ha lezel e vata gant an diou-ze, ha tremen hep tam e-unan.

'N em gaout a reas eul hiorz e lec'h ma oa koloennou gwenan. Kât a reas unan c'houlou hag hen e-barz o sonjal tremen e nozvez enni. Hogozik dioustu, eun den, eur marc'hadour, moarvad, arruas da soufran ar gwenan. Poeza 're ané, an eil goude eben; pa grogas en koloen Yan, e laras: « Han! houman 'zo unan vat, avat, houman 'vo soufret da gentan.

Yan, pa glevas kement-se, a lampas er-maez ha kwit d'ar red.

Mont a reas 'n eur parkat ed neudennet, mes an neud a luie anean, hag e kouee amzer hag amzer. Bet en devoa meur a lam 'ben m'an nevoa treuzet ar park. N'an nevoa ket kollet tout, kât a reas eur vran luiet e-mesk an neud. Ne oa ket maro c'hoaz; he zapout a reas, hag e lakas anei 'n e vruched. Mont a re war rôk, nan ouvee ken tresek pelec'h.

D'arfin, e welas eur golo, hag hen tresk ennan. N em gât a reas e-kichen eun ti; mont eure da doull ar preneustr. Gwelet a re eur plac'h yaouank hag eur pôtr yaouank ouz töl o libri bara gwen hag oc'h evan gwîn. Yan a dizoure e c'henou o sellet, rak naon an nevoa, 'met na grede ket goulen digor, na rei da c'hôut e oa enno, ken alies e oa bet tapet an de-se.

Deut re-holl a baourente d'ean, e skoas war an nor; den na respontas. Setu hen war e giz da doull ar preneustr. 'Ben neuze, ar plac'h yaouank he doa laket ar gwîn hag ar bara ebarz er pres; digoret e oa eun arc'h hag ar pôtr yaouank e-barz kenkent.

Marvad, e sonje da houman e oa arru he zad, ha, herve, ne blijte ket d'ean ar pôtr yaouank a deue da welet e verc'h.

Yan a yeas evit an eil gwech da skei war an nor; an dro-man e oa digoret. « Nozvez vat, emean, » hag e c'houlennas digant al plac'h yaouank ha gallet e vije lojan 'nean. « Ma zad, emezi, n'e ket arru eus ar foar c'hoaz, ha me n'hallan ket rei lojez d'it. » — « Me a c'hortozo ho tad, eme Yan. » Ar plac'h na oa ket kalz a stad enni, rak c'hoant he devoa da leuskel he c'hamarad eus an arc'h arôk arruje he zad; ne grade ket ober, gant aon da vean diskuilhet he zro gant Yan, hag e sonjas gortoz ken ne vije kousket he zad.

Prestik goude, ec'h arruas ar pôtr koz. — « Me, eme Yan, 'zo arru da glask lejeiz 'vit eun nozvez, mar plich. »

— « Lojet e vefet, eme ar pôtr koz. »

— « Penôs, prest eo ma c'hoan? a c'houlennas ar pôtr koz ouz e verc'h. »

— « Ya, eme e verc'h. » Tapout a reas eut skudellad soup d'he zad.

Pa oa debret e goan, e lakas eur c'hornedad hag e remerkas eun dra bennak en vruched Yan.

— « Petra 'zo ganit 'n ez vruched, ma foatr? »

— « Eun divinourz, ma eontr! »

— « Diskouel anei 'ta, ha lak anei da zivinout eun dra bennak. »

— « Ober a-walc'h a riu, ma eontr, 'met evit se 'vo red lakat balan glas en tân. »

Laket e oa balan glas en tân, ha Yan, o tennan ar vran eus e vruched, o lakat he beg er moged.

— « Ouac'h, eme 'r vran. »

— « Petra lar, eme 'r pôtr koz? »

— « Laret a ra 'zo gwîn ha bara gwen aze 'barz ar pres. » — « Klev pesort, eme 'r verc'h! »

— « Red e vo gwelet, eme he zad. » Pa oa digoret ar pres, e oa kât gwîn ha bara gwen e-barz.

— « Allo, pôtr bihan, lak anei da zivinout c'hoaz! »

— « Skwizan raio, eme Yan. » — « Eur wech hepken! »

Ha Yan o lakat beg ar vran er moged. Ouac'h! eme 'r vran. — « Petra lar? » — « Eur pôtr yaouank kuzet 'barz an arc'h. » Ha gwir e oa! Rak ker-kent ar pôtr yaouank a yeaz kwit d'ar red.

— « Mar karez, me breoù da zivinourz digant, a lare ar pôtr koz da Yan. » — « Ne c'houlan ket he gwerzan. » — « A ba! deus, lak anei en priz d'in. »

— « Allo, eme Yan, mil lur ha ma c'hoan. »

— « Bean az tevo, 'me 'r pôtr koz. » — « Mes, eme Yan, nan hall ket divinout 'met eur wech bep peder eur warnugent, anez e varfe. — P'a teus kât gwîn ha bara gwen, vo koaniet avat. » Pa oa debret koan ha laret ar pedennou, int aet da gousket.

Da e warlerc'h, Yan a debras e zijuni hag a donchas e arc'hant, hag aboue, den n'an eus klevet kozeal anezan.

Ar pôtr koz a lakas beg ar vran er moged arôk ar c'houlz a oa laret d'ean, hag e vran a varvas.

Ha kaer an evoa klask Yan,
 Yan ebet na gave.

Set' kollet gantan e vran,
 Ha e vil lur ive.

Dastumet gant Eul Lenner.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Yec'hed ar Pab. — An Tad Santel ar Pab 'n eus 'n em gavet eun tam skwiz gant e jubile. N'e ket hep digare: 500 a dud an eus digemeret hini ha hini ha komzet gante, ha daou-ugent mil a zo bet digemeret a strolladou, ha d'e holl an eus bet gret prezegennou.

Frans o tiboblan. — N'e ket sonezus mar n'eus ken a vugale en Frans. Etre seiz milion hanter a venajou n'eus nemet unnek milion a vugale, da laret eo, unan hanter dre hop ti.

Ha ped tiad tud dimezet a zo en Frans? unnek milion ha tri c'hant mil. 'Barz ar pevar milion-all a diadou tud 'zo ter gwech muioc'h a vugale 'vit er seiz milion kentan.

Tost da bevar milion a dud dimezet a zo ha n'o deus bugel ebet.

N'e ket laret e vefent gwel gristenien, ar re-za!

Roue ar Sued en Pariz. — Roue ha Rouanez ar Sued, Gustave V ha Victoria a zo en Pariz 'houe dilun. Gret 'zo d'e kalz a enoriou. Roue ar Sued a oa e dadiou koz jeneral dindan Napoleon koz. A oad gall eo eta.

Ar Bariziaoued ve lorc'h enne pa welont rouane o tout d'o gwelet. Huchet zo bet a-bouez penn: Bevet ar roue!

'Vit man. — Treo ar c'houenchoù, ar semineuriou, ar parouziou, pa ne veint ket lezet da gouean, a ve bepred roet 'vit man. Kouent Ursulined Tonnerre hag an evoa koustet ar chapel hepken daou c'hant mil lur, a zo bet gwerzet ugent mil skoed.

KELEIER EUS AR VRO

TREGER-GOËLO-KERNE-UHEL

PEMPOUL. — Mouget er morfond. — An Tacon, oajet a 69 vla, eus Plounez, a oa et disul da welet e c'hoar a oa klanv hag o chom en Plourivo.

O return da noz, 'vit troc'han berroc'h, e fellas d'ean heuilh an treaz. Mes tenval e oa, hag e kollas e hent ha koean er morfond a lez ar mor war e lerc'h. Eno oa kavet mouget an de warlerc'h.

PLOUËK-AR-MOR. — Beuet. — Intañvez an Daniel, eus Len-al-lan, oajet a 60 vla, a zo bet kavet beuet er stank-kannau, tost d'he zi. Ar greden 'zo eo bet kouet en dour dre zarvoud.

PLAERANEK. — Al laer. — Intañvez Delaunay a oa bet diaviz a-walc'h da Jezel he yalc'h war an dol en he zi. Pan arruas da glask anei, oa et gant al laer. Pemp lur ha tregont oa enni.

PLOUBER. — Evel gwechall-goz. — Gwechall-goz, kerz ar Revolution vras, ar veleien

n'hallent ket bale, nemet an noz, ha c'hoaz ma'tel an noz na harze ket ane a-wechou da vean tapet gant ar Re c'hlas, ha kaset d'ar maro.

Al lezen a hirie na ro ket c'hoaz urz ha gourc'hemen da zistrujan ar veleien, mes kement hag ober a ra. Anez ze, ne vije ket c'hoarvezet gant an otro Savidan, kure Ploubër, ar pez a c'hoarvezas gantan diriou, da der eur goude kreiste.

E oa o tremen kichen Kerazern, pe welas dirakan eur vanden bôtred sparlet an hent gante drenz-da-drenz. Dek e oant, ha gante eur pikol ki hirr e skilfou; mes n'e ket ar c'hi a oa c'hoaz ar fallan stummet.

O zonz a oa harz ar beleg da vont pelloc'h ha kregi warian. An otro Savidan a gavas koulskoude toull da dremen war vord an doufle, mes darbet 'oe d'ean tapout eun töl troad gant unan eus ar gantarded. Heman, avad, o vean eo kamm, eun em gavas re verr e dol. Pa weljout oa tremenet an otro Savidan, hag int da redek o dek war e lerc'h eneuriletan eil d'egile: Lazomp anean! Den na welo! Mes re verr oa war o alan da heuilh ar marc'h-houarn, hag int da hisan o c'hi. Ar c'hi a lampas, a grogas en soutanen an otro Savidan, a skoas ezent en c'har hag a reas d'eanpoz. An dek-all oa arru d'ar red. Petra d'ober, e-unan penn eob da unnek ki klanvvet? E et mat, gasas d'ean neuze sklerijeù; hag hen o tennan eun alc'houe eus e c'hodol hag o vantan anean warne kiz eur bistolen. Ar gantarded spontet, a souzas a-dre, hag ar beleg, goude bean deut a-benn da 'n em dizober, gant poan, eus ar c'hi, a zavas prim war e varc'h-houarn hag a dech'as.

An dud-man a zo eus Coarouneec. Gret eo bet o gourc'hemennoù da bolis Lannou.

Ha setu eno eur skouer eus ar pez a vije gret gwechall goz d'ar veleien, e kerz ar Revolution vras, hag ar pez a ver adarre war an hent d'ober d'e.

TREDARZEC. — An evaj. — Evoa Coas-doué, mevel en ti Ollivier, er Gosker, a oa meo dilun pa oa ar c'houlz d'ean da vont d'e labour.

E vestr a lezas anean en ti, mes nebeut amzer goude ma oa et d'ar park, e klevas kri-forz tresk ster ar Jaudi. Pan arruas e oa lampet e vavel en dour. Klasket eo eur vag 'vit mont d'hen kerz'hat, mes pa oa tennet ermeaz e oa maro.

E GWERZ :

An Teir C'had hag ar Mevel laer

daou bez-c'hoari farsus dastumet gant KLAODA AR PRAT.

Peziou koant ha mat tre da vean c'hoariet gant pôtrd yaouank ar patronajou.

Al levrig: pevar gwenneg.

A bep tu e teu d'imp gourc'hemennoù evit al levrig-ze a zo lennet betek e Bro-Wened. Setu aman ar pez a skriv d'imp eul lenneez vat a Wened: « E tan a zigemer ar Mevel laer hag an Teir c'had. Braut! Entren ar Prat, hag inour 'oh! » Tregeriz ha Leoniz, ne chomomp ket warlerc'h ha lennomp, ni ivez, oberou hon mignon mad Klaoda. Dudi a zo a-leis ouz o lenn.

E Ti-Moulez Sant-Gwilherm

SANT-BRIEG, 27, bali Charner, SANT-BRIEG

An Aviel katolik, gant an aotron abad BILLEN, gloenn karton ha skeudennou (gant ar frejou-kas).....	4 real.
Prezegen war Buez ar Vro, gant Job an Her.....	2 gwenneg.
Hent ar Groaz.....	3 gwenneg.
Bue sant Anton a Badou.....	5
Pedennouigoù ha kelennaduroù d'ar vugale.....	2
Morzerenti an Tad Perboar.....	1
Bue an Tad Perboar.....	1
Al leaz.....	1
Mouledi al labourer.....	1
Gweez sant Mito.....	1
Gweez sant Koner (skeudennet).....	1
An diout-poatr.....	1
Kân an 'Islanded. Kentoc'h mervel. Feden ar cartoloded. Gweez sant Kemo, hag all.....	1
daou evit.	

Eun diskenn war ar priz evit am eur hini.

bilajen, 'n eur lenn, d'an noz, gwerzioù, marvailhou ha keleier o c'hazeten, da c'hortoz ma hallfont, direzatoc'h, skrivan enni, d'o zro.

E zonz e oamp hou dije tapet tri c'hant bugel 'benn fin ar bla. Marteze e toufoint. Nag a barouz, war an 39. ha n'eus enne, 'vel a welet, nemet eur bugel hepken ! Da c'hortoz tapout dek, e hallfont da vihanan, mont betek tri. pevar.

Ma teuje ar parouziou n'o deus nemet daou, da digas hep a daou-all, hag ar re n'o deus nemet unan, da digas hep a dri-all, ec'h ajemp raktal betek 300 hag ouспен.

Breman, epad ar gouanv, eman ar mare da lenn, da skrivan, da ganan ha da zeski peziou-c'hoari 'benn ar goueliou d'an hauv, hag ive, 'benn ar *skrivadeg vras* a vo gret etre holl vugale ar *Vreuriés*, wardro koulz gouel ar Rouane, da vla. Breman eta eman ar c'houlz da zont er *Vreuriés*, 'vit bean barrek da lenn ha da skrivan 'benn ar goueliou hanv.

'Vit ar skrivadeg, vo roet tregont lur briju. Deomp 'ta mui-ouz-mui da *Vreuriés ar Brezoneg*, savet evit mad bugale Breiz, evit mad ar Fe hag ar Vro, d'eur *Vreuriés* na n'eus enni nemet gounid da gât en pep doare.

ILIZ GWENGAMP

War eun dosennig a-us d'an Treo, A dremen sioulik dindan an delio, Iliz koz Gwengamp 'zo diazeet, Evel eur c'hastel, war ar roc'h kalet !

A-us d'an draouien ha da die ker, Diwardro 'weler o sevel en er, He zourio uhel, dispar-tre o zri, En dro d'ê evned, 'vel 'n dro d'eur c'houldri.

Unan aneze, hanvet an Tour-kreiz, Lod 'nean savet 'rôk Charlez a Vleiz, War beder wareg 'zo diazeet, Gwareier teo-teo, a c'hiz koz bolzet !

An daou-all, tost-tost an eil d'egile, Etreze war-dro pemp kammad bale, Gwechall 'oa henvel ; breman e weler Tour ledan ha moan, kenver-ouz-kenver.

'Krec'h an tour ledan eman ar c'hleier, En-kreiz, ar c'hloc'h bras, ar c'haeran glever War dro, ha tri-all. An hini bihan, Koz-koz, da dintal a-vec'h a dihan !

Tour an horolaj 'hanver an tour-all ; E vein 'zo debret gant an amzer fall ; E disheol heman eman ar Porched, 'Lec'h ma teu kement a berc'herined !

Porched binniget, ti santel ar Vam 'Deur da bedi, a-bell, da Wengam ; Ennan 've dalc'hmad evel eun ezen A sav eus golo hag eus ar bedan !

En daou du d'ean, a-hed ar voger, 'N daouzek abostol, kenver-ouz-kenver, Hag 'us d'an oter, uhelik e krec'h, Itron Wir-Sikour, he Mab war he brec'h !

« Salud, o Gwerchez, nan hallomp tremen « Hep lavaret d'ec'h eun tammik peden : « Eus ho tron uhel, war ar beajour ; « Skuilhat ho pennoz, Itron Wir-Sikour ! »

Ha breman, deomp diabarz an Iliz, Toulllet he leur-ven gant treid ar Vreiz ; Gwasat m'eo ledan, ha ma kav an den Levenez, pa 'lar enni eur bedan !

E-kreiz an iliz, bep seurt gwareier, Savet pell a zo, e pep koulz amzer ; E tu hanter-noz, pilhero moan-moan, A-dal da re-all pouner ha ledan !

A-us e c'haller, 'tre ar vein tremen Ha kât labouriou 'vel ne ve gret ken, Mein-touz kizellet ken brao ha ken mat, Ma reont d'ec'h chom batet bep kammad.

Pen an iliz 'fat, a zo eur burzud ; Ar re 'doa savet anean 'oa tud ! Gant e volz ledan, en mein-benezer, War ar gwareier na petore pouez !

Harpet int bep tu, ha c'hoaz e plegout : Mes pemp kant vla 'zo, ma n'eus ket 'n tu-Ar vein-ze 'zo bet priennet ken mat, 'hont. Ma chomont peget ha kompouez dalc'hmat !

Dindan ar c'heur-bras e zo relego, Relego prinsed pell a zo maro, E wareier kaer, gwechall, a zo bet Gant Charlez a Vleiz, krec'h-traou alaouret.

Tro-zro an iliz 'weler, war gwer kaer, Bue ar Werchez, bue hon Zalver, Sent ha sentezed, ha darvoudou-all E kerig Gwengamp c'hoarvezet gwechall.

Dindan ar gwer-ze en em gav bolzio, Elec'h ez eo bet, goude o maro, Douaret kalz tud a ligne uhel, Lod ane brudet en hou Breiz-Izel.

Ma 'peus lagad mat, gret tro an iliz, Hag e kavfet c'hoaz mear a dra iskis ; Mes arôk mont kwit, ma plij, daoulinet, Ha gret eur beden d'ho Mam binniget !

Kantvlavejo 'zo, ar Vretoned koz O deus gouennet diganti bennoz, Evelte, Breiziz 'n em blijet ive O tarempredi ti Mam ho Toue.

G. D.

Sonjezonou mat

1° Kaer en devezo an den ober er bed-ma, ne pec'ho morse na dionz lagad Doue, na diouz monez e goustianz, na diouz tol ar maro.

2° N'eus nemet an hini a zo gouest da c'hour-c'hemen warnan e-unan a gement a hellfe gour-c'hemen war ar re-all, evel ma 'z eo dleet.

3° Tra souezus ! Evit lod, an amzer n'eo netra, ha koulskoule e koller pep tra, pa goller an amzer.

4° Ne zellit ket hepken ouz an droug a ra ar re-all, sellit ive ouz ar vad hoc'h eus da ober.

5° Aon a dleomp kaout, nan rak ar maro, mes da veza sourprenet gantan.

LEVRIOU NEVE

Goulen e ti-moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner, Sant-Brieg :

Aviel katolik, gant an aotrou abad BLER, dre ar post. 4 real.

Pipi Gonto, gant DIR-NA-DOR, dre ar post. 29 gwennege.

An teir c'had hag ar Mevel laer, dre ar post. 5

Tog Jani ha pôtr e vragou berr, dre ar post. 6

Kement Breizad a gar e Yez hag e Vro a dlefe kaout en e di al levriou-ze, eman ar priz anê ken marc'hat mat ha ma hall bezan.

Gant an daou levrig diwezan, e tigoromp eur rummad levriou nevez a vo dalc'het gantan ha laket d'an izelan priz ma vo gallet.

Kavet e vo, er rummad-levriou-ze, oberou a bep sort, dreist-oll peziou-c'hoari, kontadennoù, kenteliou war histor ha sent ar Vro.

Ma teufe hon mignoned da c'houlenn anê stank a-walc'h, e vefe moulet al levriou-ze bep an amzer, rekiz-mat.

Galvet int d'ober berz ha... vad, 'zo gwelloc'h. O erbedi a reomp start d'hon mignoned.

E GWERZ

TIMBJOU BRETON

Timbjou breton eus ar braoan a bep lion, warne skrivet pep seurt gizioù a skouer vat evel : *Douc ra viro Breiz. Dalc'homp stard bepred 'vit Breiz*, hag all, a zo en gwerz en Kroaz ar Vretoned, 'vit mad *Breuriés ar Brezoneg*.

Pemp timb evit eur gwennege, hag eur gwennege 'vit ar frejuz-kas.

War grejuz an timbjou-man e ve peget an timb gall.

E GWERZ

Peziou neve gant DIR-NA-DOR

POTR E VRAGOU BERR -- TOG JANI

(ar pez-man bet d'ean an eil priz en Plougastel).

Peziou gret, an hini kentan, evit pôtréd yaouank pe krennarded, an eil evit merc'hedigou.

Al levrig : 5 kwenneg, 6 gwennege dre ar post. Ar re a gemero meur a hini, 'vo gret d'e disken priz.

Setu aman peziou berr hag ezet da c'hoari : n'eus ket ezom a wiskamanchou kaer na koust ebet 'vit o c'hoari. A-hendall eun dra beo int, fentus ha skouerius war an dro.

Breman, epad ar goanv, er patronajou hag etouez ar vugale hag an dud yaouank, eman ar gwellan koulz da zeski peziou hag a ray dudi ha plijadur kement o gwelo.

Perak ne gavfer ket pôtréd yaouank hag 'n em glevfe etreze da zeski peziou evel ar re-man, re Klaoda ha re Dir-Na-Dor, ha d'o c'hoari er parouziou ?

O digoll o defe, ha vad a rafent d'e o-unan ha d'ar re-all.

Memes tra, ar merc'hed bihan a hall deski ezet bras eur pezig evel *Tog Jani*, gret ispisial evite, eur pezig fentus hag ennan eur gentel c'houek.

'Vit c'hoari ar pez-man, petra 'zo ezom ?

Peder blaec'h vihan, eur banerad pilhon, tri pe bevar dog plac'hed, eur boned hag eur mezellour, ha netra ken.

'Vit c'hoari *Pôtr e vragou berr*, eur c'hoz vragou, eur gegel, eul letern, diou pe der skudel hag eur gwiskamant paket 'n eur doubier.

'Vit c'hoari ar *Mevel laer*, n'eus ezom nemet daou bôtr, ha netra ken.

Ar gwiskamanchou, er peziou-man, a zo holl 'vel war ar meaz.

Hastomp eta prenan ar peziou neve, ha d'al labour raktal, *ma teuis pep parouz da gât he strollad c'hoarierien ha c'hoarierezed, hag eun tam diduamant eur wech an amzer d'ar zul.*

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU

hag asuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paeen eiz gwennege dre vil nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement asurans a zo, asurans tan, asurans tud, asurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherourien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri mitez pe mevel, pe tud impliet diindanan a dle kas kalo da E. AR MOAL, 27, bali Charner, Sant-Brieg.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober asuransou en aroudisamant Gwengamp.

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besioù
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN O

Le Gérant : F. GOUYETTE

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoed evit ar broiou estren hag evit ar Broioù keltiek.

RENERDOEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EDDANNOU-KONVERZ HA
KODMANANCHOU

An Actrou TOSWELLEN, 27, bali Charner, a zigemer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURSEZ AN GAZ.
Gant brezonek eo douar ar feiz.
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.
FURSEZ AN GAZ.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'hiet,
Ouspen ar Vez, e ve Pa'e ho di
MILIN.

ALUZENNOU DA "GROAZ AR VRETONED"

An actrou Huon a Benanster. 2 skoed.

KANVOU

Ar maro o tremen a lak ar zun-man merk ha liou ar c'hannou en ker'henn Kroaz ar Vretoned. N'e ket eun tol hepken an eus skoet, daou eo. Gant an hini kentan eo bet lizet an otro Vallée, kroner Kroaz ar Vretoned, hag e gerent : e yeontr, an otro Trevidy, bet prezidant en lezvarn Kemper betek an de ma santas oa kraban ar Fran-masoned kas louzan d'ean e zae gwerc'h a varner, a zo marvet dimerc'her en Laval. Oajet a oa a 78 via. Bet am oa ar blijadur hag an enor da welet anean meur a wech ; ne oa den en Breiz ken kalonek hag hen 'vit kement a zelle ar wirione war istor ar vro. Bean 'n evoa, ouспен, eur wiziegezh dispar. anaoudegezh war bep amzer eus hor istor 'vel p'an ije bet bevet eune. Kalz a oberou an eus bet skrivet, ha gant pep-hini ane an eus bet laket ar sklerijen da batan en korn pe gorn eus istor hon Bro.

Holl lennerien ha skrivagnerien Kroaz ar Vretoned a gemer lod en kanvou an otro Vallée hag e gerent, hag a bedo 'vit ar Breton mat ma oa e yeontr koz.

An eil tol an eus skoet ar maro an eus lizet hon mignon Bocher (Ar Yeodet), rener Kroaz ar Vretoned.

Digwener d'abarde e tigoueas gantimp ar c'helo poanuz e oa maro e dad, Dirion, da eiz eur eus ar beure, goude bean gouzanvet, hep en em glemm, eun nosvez war he hed a boanion kalet, e oe galvet gant Doue d'ar bed-all.

An otro Bocher a oa eur Breton a c'hiz koz, seurt ma ra plijadur d'an daoulagad paran warne. Bet e oa gwec'hall er brezel, en Itali, o tifenn ar Pab, ha kentan karante a oa en e greiz, gant karante Doue ha hini e vro, a oa karante ar Pab. Pa gomze eus Pi IX, e seblante e wad birvi adarre en e wazion, 'vel d'an amzer ma 'c'h e d'an tan en eur youc'h al a-bouez peun : Bevet Pi IX !

Eun den rik a oa pen-da-ben en e vus ; kaout d'ober gantan oa kaout d'ober gant ar wirione hag al lealded. Ne vralle ket muioc'h war eun tu 'vit war eun all, mes hepred eun warza ar wirione, ha karantez gant pep-hini. Dre-ze, hag en neve arru, koulz laret, en Sant-Servez, an otro Bocher a oa brudet ha karet etouez an dud ; ezet 'oa gwelet se, disadorn, diouz an niver a vignoned a oa deut d'e gas d'e ve. An iliz a oa leun-chouk hag er c'heur e oa daouzek beleg. Servijon eleiz a zo bet laket 'vit repez e ine.

Eun drue eo hag eur c'holl evit ar vro gwelet tud a doug dirake eur skouer ken uhel, o kwitat an douar lec'h ma zo kement ezom breman a skouer hag a geleannadurez vat.

Da vihanan, an otro Bocher a lez, d'e heul, eun tiad tud hag a gerz dija ampl war e roudou. Gout ouzont penos argwellan peden 'vit eun tad karet eo heuilh e gentelion. Oberou mat ar vugale a bed evit o c'herent maro.

Lennerien Kroaz ar Vretoned a ray eur beden ive evit ine ar c'hevroad leal-man.

Hon gourc'hemennou a genganv d'an itron Bocher, d'he zud, d'he bugale, ha dreist-oll d'ar Yeodet.

JUBILE AR PAB

E brezegezh da belerined Frans

Setu aman ar brezegezh ken kaer ha ken tener a reas an Tad Santel ar Pab d'ar gatoliked eus Frans, kardinaled, eskibien, beleien, kristenien et da welet anean da Rom evit jubile e hantekantved a velegiezh.

Ar c'homzou-man a zo eur respout d'ar c'hardinal Luçon, a gomzas d'ar Pab en hano ar mil a belerined a Frans a oa bet digemeret holl asamble en palez ar Vatican.

« Otro kardinal, ho trugarekat a ran da vean gret d'in, en eun doare keh karantezuz, gourc'hemennou pelerined Frans a zo aman.

Piket ho peus ma c'halon. Gwir eo ar pezh a laret : an Otro Doue a blij d'ean meskan tristidigezh ha plijadur ; elac'h Miserere ar rann-galon, e kanomp hirie Te Deum an anaoudegezh vat.

Roet ho peus da anaout, 'n eun doare tener hag helavar, perak oun bet glac'haret ha perak 'n em gavan kourfartet.

Glac'har am oa o welet bugale o tilezel o Mam, oc'h ober brezel d'an iliz, o laerez, o wapat anei, ha hi koutskoude oc'h asten he dorn d'an holl evit o zalvi. Paour kez Mam ! Paour kez bugale ive, ar re a zo chomet stag outi hag a glask he frealzi en he foanion.

Mes red eo plegan ha senti da volante Doue. Biken n'hallin trugarekat trawalc'h an otro Doue da vean roet da eskibien Frans an ali am eus gret. Laret am eus d'e : « Heuilhet ac'hanon war hent ar boan ; ha ma brasan poan eo n'hallan ket bean en ho touez 'vit stourm ha gouzanv eveloc'h. »

Doue an eus tennet ar vad eus an droug. Setu eno ma c'houfret ha ma joa : Frans he deus diskouezet e oa hepred merc'h hanan an iliz, n'e ket dre gomzou hepken, mes dre oberou, ha dre ar c'haeran eus an oberou.

Laret em eus d'an eskibien : Kwitaet ho palezion, ho seminédion ; ne gemeret seurt ebet digant ar re a laer ac'hanoc'h, gant an da goll hoc'h enor hag ho frankiz.

Et d'arben hent d'ar baourante ; sellet ouz hon Salver noaz-pilh war e groaz, mes leun a c'hloar, abeun tri de, en eur zével a varo da veo. C'houi 'po an trec'h ive.

Dont a reas 'vit an eskibien an de ma renkount 'n em dispartian diouz o mibien muian-karet, ar c'hloer, red d'e kwitat o c'hloerdion ; gwelet a rejont al leanezed, servijerezed ar beorien, kaset ermeaz eus an hospitalion ; ar vevoc'h, mistrikel ar vugalijou, boutet ermeaz o bro, ha red d'e klask repu er broiou pell, tra ma teue o mam da zerri oute dor o zi.

Gwelet e oe neuze ive eur burzud bras a Zoue, hep e bar 'harz an amzeriou dremenet. An holl eskibien, unanet evel pa n'o dije nemet eur galon, a zentas ouz komz ar Pab, 'vel pa vije bet komz Doue. Ar veleien a heuilhas ar skouer roet d'e gant ele o ilizou. Ar gristenien a lavaraz 'n eur vouez d'o fastored : Kontet warnomp ! N'ho po ken eur palez 'us d'ho penn, mes ni a gavo d'ac'h eur lec'h da ziskwizian goude ho labouriou ; n'ho po ken ho seminédion bras ha kaer, mes c'houi

hallo c'hoaz sevel beleien e harz hon ilizou. N'ho po ken ar Venec'h d'ho sikour, mes eleiz a ineou kristen a gemero o lec'h, ha ni, gant hon diou-vrec'h hag hon c'halonou a roo d'ac'h skoazel evit miret en Frans an iliz katolik.

Setu aze perak, mar 'm eus goulet o kanan Miserere an dristidigezh, e tlean ive kanan laouen Te Deum an anaoudegezh vat. Ya, kement gwec'h e sonjan en Frans, e kan ma c'halon an Te Deum a drugare.

Evrus oun eta o welet ac'hanoc'h aman das-tumet, 'vit'ho trugarekat eus ar vad ho peus gret, a ret hag a refet c'hoaz evit gloar Doue hag enor ho Bro.

En eur-man, me a laro d'ac'h komz an Abostol : Chomet start en ho fe ! An enebour na gousk tam ebet ; mar chilaouet-ouz e vouez traitour, e rei d'ac'h koueun en e rouejon ; hag an enebour a zo o klask krog warnoc'h en pep mare. Bezet eta war evez !

Bezet nerzus ha kalonek en hoc'h oberou ; bezet krenv da stourm, 'vit difenn ho kwirion santel, ar gwirion a zo bet roet d'ac'h gant Doue e-unan, hag a zo kaeran 'tra 'peus bet eus e zorn.

Gret ive pep tra herve ar garante. Karet an dud ; holl int breudur d'ac'h, bugale ar memes Tad a zo en ne, prenet gant ar memes gwad sakr, galvet da gemer lod er memes heritag.

Pa 'po d'ober, zoken gant hoc'h enebourien, bezet karantezuz hag hegarat, ha gant ho komzou hag o toareou mat e tigasfet ane tam ha tam da gemer peurz en ho kiedennou.

Setu aze ma gourc'hemennou d'ac'h, bugale muian-karet ar Frans katolik. Bezet fians ; ar Mestr a zo ganac'h en emganu hag en trec'h, er boan hag er frealzidigez.

Evit pep tra, trugare ! Trugare da Zoue, trugare d'ac'h ive, ma bugale, c'houi hag a frealz ma c'halon dre an dudi ar vrasan.

Pa vet dizro d'ho Bro, c'houi laro d'ar gristenien, ho kenvroiz, e kay kaer ar Pab ar pezh a reont, eman gante en o loanion, hag an eus ar greden e vo gante ive da ze ar viktor. Laret d'e pedi hepred evit ar Pab, d'ean da hallout ober d'ar broiou-all ar vad an eus gret da Frans.

Ra diskenno warnoc'h holl bennoz an Otro Doue ! Ra diskenno war an eskibien, ma joa ha ma c'hurunen ; ma joa, abalamour d'an dorn a roont d'in da c'houarn an iliz ; ma c'hurunen, dre ma 'z int evel stered lugernus en holz an iliz. Ra diskenno war ar veleien, 'vit ma voint hepred skouer o fobl ha mestrou kalonek arme an Otro Doue.

Ra diskenno war ar c'herent ha war ar vugale, war ar pinvik ha war ar paour, ha ma vezo ar bennoz-se, evit an holl, eur vammen a dudi hag a c'hrason niverus. »

AR BONED HAG AN TOG

Ma vijen-me den da « disputi », ma zavje eun « disput » etre ar Boned hag an Tog. Ar gwasan, vije kaout eur Boned da disput ouz an Tog, rak ne weler ken dre-holl nemet tokou. En eur ober eun daouzek pe drizek vial, an Tog a zo 'n em zilet er vro ha kaset ar Boned da stoupa. En amzer gentan an Tog, ar Boned an evoa tu warnean ; ober 're gwap, ober 're fent war an dra distres ha lorikennek a lake mammou a oa d'o bugale hag a rente ane hevel ouz eur spontailh e-kreiz eur park. Breman, avat, ar boned 'o eus renket serri e c'heno, ha setu d'e dro, et an Tog da vestr. An Tog a zo mestr koulz war ar meaz 'vel en kâr.

AR GER VILLIGET

GANT
LAOUIK

(KENDALC'H)

IV

Pa goueas Fanch en porz an ijinerez, ar re a oa wardro en em lakas da c'hoarzin da gentan : sonjal a rent e oa an evach an evoa gret d'ean helpen. Pa welchont ne finve ket, e testachont koulskoude. Daou pe dri a digras ennan hag a c'hoantaas lakat anean war e gred :

— Allo! hop! eme; ne zonzez ket, michans, e chomfomp aze da sintan ac'hanout e-pad ter eur?

Mes Fanch n'an evoa dalc'h ebet; evel maro e oa. En eur gouean en evoa stoket e benn en eur men, hag ar gwad a rede stank war ar porz. O welet ze, e teuchont da vean nec'het. Ar c'honter-vestr a reas mont da glask eur wetur ha lakat anean e-barz da vont d'an hospital.

— Gret an hent priman m'hallfet, a laras, betek gout e vefe maro arôk arruout; pa vo du-ze, ni a vo dizam.

Ar c'helo a yeas prim dre an ijinerez. Bean 'oa hag a lare e oa maro; re-all, ne vije ket en bue betek an hospital. Unan a yeas evel kas ar c'helo d'e bried; dre chans e oa diarbennet gant ar seurez, rak da c'houzout e oa petra a vije c'hoar-veet ma vije diskleriet d'ei re brim ar c'helo trist-ze.

Pa deuas Fanch d'ean e-unan, ne oa ket evit gouzout pelec'h e oa; c'hoantaat a reas sevel en e goaze da zellet endro d'ean, mes ken zempl e oa ken n'haile ket finval. Kas a reas e zorn d'e benn a re poan d'ean, hag e santas e oa paket gant lieno, Ankeniet, e souje :

— Daoust pelec'h oa aman, ha petra 'zo c'hoar-veet ganin?

Esat a re klask, mes ken bras e oa e fallente ken ne oa ket evit kaout penn da vann na lakat daou zonz an eil warlerc'h egile. Gwelet a re e oa noz dre eur prenestr ledan hag uhel a oa dirakan. En eur zal vras sklerijennet trist e seblante d'ean bean, mes pelec'h? ha dre bennoz e oa deut eno? Ne oa ket evit gouzout. Esaat a reas finval c'hoaz ha ze a reas d'ean loskat eur glemmaden. Eur vouez a zavas neuze a goste d'ean :

— Sel, eme, nan e ket maro.

— Pion eme eun all.

— Ar Breton 'ta.

— O! ar re-ze o deus kroc'hen kalet.

Eur c'hoarzaden a respontas. Mes en tu-all d'ean, 'petra a glev? Eur glemmaden a zav, spon-tus 'barz zioulder an noz klemmaden leun a anken, a spont, a baouez a vareo evit hadkrigi adarre.

— An numero seitek, 'me ar vouez adarre, a zo arru izel.

— Ya, 'me eben, nan ay ken pell.

Ar c'homzo-ze a digasas ar sklerijen en spered Fanch : en hospital e oa. E-wad a skladas en e wazio o sonjal ze. Koueet e oa eta en ijinerez pa oa roet e gont d'ean hag e oa digaset eno! Dre be sort chans na oa ket maro?... Ma vije et dirak Doue er stad ma oa!... Mes e stad nan e ket nemeur gwelloc'h!... Pion a lar ne vo ket maro 'benn varc'hoaz d'ar beure, hep beleg, hep zikour ebet, hep komz dous da gennerzan anean! Mervel! evel eur c'hi!... Evel an hini a zo aze stok d'ean, hag a c'halv ar vue gant an holl nerz a lak ar spont hag ar c'hoant da vevan en e gorf uzet!... Ar paour kez! 'N em ankouat a ra Fanch evit sonjal ennan! Karout a raje gallout sevel evit laret eur gomz vat beunak d'ean ha glebian e vuzello entanet; evit ma welche daoulagad eur mignon o paran warnean en eur diwean.

Allaz! nan hall ket finval, hag e dro a deuo hep dale ive marteze; e spered ac'h a neuze war-zu e bried hag e vugale. Penaos e vo o c'hont, mar digoue d'ean mervel? Nebeut a zikour o devoa gantan, eur pennad 'zo, mes petra deufont

da vean pa n'o devo tam ebet ken!... Re boan-nius 'oa an holl zonz-ze evitan, hag e kollas noten a bep tra.

An de warlerc'h d'ar beure, pa deuas d'ean e-unan, ar sklerijen a leunie ar zal. Seblantout a re d'ean e tigase ar sklerijen-ze ar vue ennan goude holl ankeniou an noz. 'N em zantout a re krenvoc'h eun tam, hag e benn a re nebeutoc'h a boan d'ean. Gallout a reas trei e benn eun tammig da daol eur zell ouz gwele e amezeg a glemme kement an nozvez-ze; ne oa gir ken; eul linsel a c'holoe ar gwele penn da benn...; maro oa. O welet ze, e galon a zerras. Klevet a ra komz en tu-all d'ean hag e chilaou.

— « Dihun eo « ar c'houezek », 'me unan; arru oan da zonzal e oa chomet kousket da vad. »

— « Ne oa ket a riskl, 'me eun all; hag « ar seitek », maro e? »

— « Ya, 'mes poan an eus bet o tremen; (en eur izelaat e vouez) red 'zo bet rei souben unnek eur hanter d'ean erfin; anez ze, an ije delc'het da grial e-pad an noz. »

— « Souben unnek eur hanter! penaos? »

— « Penaos? nan e ket start : unan a zigor e c'heno d'ar c'hlanvour hag eun all a diskarg al louzou e-barz; ze ra d'ean tevel ha mervel hep zantout poan ebet. Ha! ha! n'ouzout ket ze c'hoaz! me 'zo aman eur pennad 'zo hag em eus gwelet bep sort. Mes peoc'h! arru e ar medesin. »

Fanch a chilaoue ar c'homzo-ze, sponronnet. N'an evoa ket amzer da houezan kalz warnê, rak ar medesin a digoue e ouz koste e vele ha tri den yaouank o heuilh anean. Ober a reas eur zell mad outan, ha, goude bean tastonet e vruched, e laras :

— « Chans an eus bet o vean diwadet evelse; anez ze, e vije maro war an taol; eur c'houfr mat an eus c'hoaz, en despet d'eur vue dizurz ha poan-nius. Gant evez e kredan e vo pare 'ben ter zunn pe eur miz, 'mes da diwall an nevo : mar 'n em lak c'hoaz d'evan, an eil gouad na vo ket pell diouz an hini gentan, ha da c'houzout eo hag-en e tremeno memez tra. »

Rei a reas urzo, a skrivas unan eus an dud yaouank war eur c'haier, ha neuze ec'h ejont pelloc'h. Fanch an evoa evel komzo an doktor, hag an daero a deuas en e zaoulagad ouz e glevet. Gallout a rafe c'hoaz eta dizrei d'ar vue! N'en em zante ket din eus ar c'hras-ze goude e holl dizurzo; trugarekaat a re Doue da vean kemeret true outan, ouz e bried hag e vugale. Mar 'nije gallet, da vihanan, kas ar c'helo mat-ze d'ei! Allaz! n'anavee den en hospital.

Pa oa er zonzou-ze, unan eus an dud yaouank a oa oc'h heuilh ar medesin a dizroas ouz koste e vele.

— « C'hanta! ma mignon, emean, 'n em denn a refet ar wech-man, herve 'n eus laret an doktor; da diwall a zo c'hoaz, avad. N'esait ket komz, ze a skwizo ac'hanoc'h re; chilaouet ar pez a larin d'ac'h; gant eur zin eus ho taoulagad me a intento ho respont. Nan oc'h ket mab da Yan Marrek a oa gwechal merer en Kerverek, hag eman breman e vab henan en e lec'h? »

— Eo, eme Fanch, en eur zerri e zaoulagad hag o tigeri ane raktal.

— Donetans am oa, a-dal am oa gwelet ho hano war leorio an hospital. Euris on da vean kavet ac'hanoc'h, rak me 'zo mab d'an otro Caradec, perc'henn ar vereri, hag a zo aman oc'h ober ma studi evit bean medesin. Ober a rin eus ma gwellan evit ma vefet ervad keit ha ma vefet aman, ha mac'h efet er-maez prim ha prim.

Sello Fanch a laras d'ean pegement a anaoudegez a oa en e galon o klevet e gomzo; koulskoude, eun nec'hamant a chome en e zaoulagad hag an den yaouank a daolas ple da ze.

— « Eun dra beunak hoc'h eus da c'houlen ouzin? » emean.

— « Ya, eme Fanch. »

— « Laret d'in petra eo, ha mar gallan ober plijadur dac'h, me her graio, a dra zur. »

— « Rei kelou diouz d'am fried, emean, gant

eur vouez zempl. »

— « Pelec'h eman o chom? »

— « Ru ar gar, N° 18. »

— « Raktal ec'h an d'he gwelet; kemeret kalon; laret d'ac'h hoc'h-unan ec'h e ret yac'haat, ha gret, hep stourm, kement a vo laret d'ac'h : primoc'h a ze ec'h efet ac'han. Kenavo. »

Hag hen o tec'hel hep rei amzer da Fanch da drugarekat anean. Diwar neuze, heman a c'hou-zanvas e boan gant muioch a basianted; ar peoc'h a deuas en e galon. N'en em zante ken kement e-unan, hag eur beden a drugare a zavas diwar e vuzello betek an Env.

(Da heuilh).

LAOUIK.

MA MESTR HA MA DOUE

(Induljans a 7 vlo ha 7 koueziz staget gant ar Pab Pi X ouz ar bedennig-se)

Ma Mestr ha ma Doue! Me a gred hag adort! Ar feiz gristen a zo d'ar bed-all tarz an deiz; Koumoul ar vue-man, dre garet deut rouez, War gloar Jezuz-Hosti 'lez gwelet an digor. Dindan ar Bara-Zakr, Bue surnaturel, Me a gar ma Zalver, ma C'houer eternel.

Ma Mestr ha ma Doue! lar Tomas divalo D'e Vestr 'n em diskouet 'n e c'hoar gant karante. Tomas a lak e zorn e goul e goste E galon o krenan koulz hag e vuzello; Mes ar c'hrenan-ze gas d'ean silvidigez : * Ma Mestr mad, emean, neveet 'pens ma feiz. »

Da goulz ar goureo, pa welan an Hosti, Evel eur rozen wen, 'tre daouarn ar beleg, Ma c'halon a gristen, tom hag anaoudeg, D'ar feiz ra kerkent ma daoulagad senti. Dindan liou ar Bara me 'wel, a gred, heb mar, Penos eman Jezuz, ha d'an holl m'hen lavar.

Savet d'an nec'h, Bara hag a zo eun Doue, Savet, bevet, ranet dindan ment eun Hosti, Pignet en osteusour keit 'man o vog'idi 'Vidoc'h an ezans sakr, 'Barz an env, an ele Lavar glear hag enor ho Touez kuzet, Ouzimp 'dre an oabl glas, ar c'huz-heol alaouret.

Ma Mestr ha ma Doue! kri ma feiz inanet, Hag a lam eus m'ine, klevet ganin hepken, Pa deu eus ar sibor ma Jezuz da disken War ma muzello paour 'n em ine 'vit monet : D'eur banket heb e bar Jezuz c'halv ac'hanon, Me, poultren ken dister, ha hep mirit drezon.

Pa bign an heol kan eus ezen ar beure, E lar galloud Doue da bep tra 'pad e dro; Hag an treo holl d'an den a lavar e hano. An Hosti Sakr, kenkoulz, a gomz en hon ine Eus kraou kuz Betleem ha gloar Mené Tabor : Izelder, uhelder 'gan da Jezuz enor.

Ma Mestr ha ma Doue! Rone a c'hoar dispar, Pa vin war ma gwele, me dare da vervel, [kervel, Gret ma 'm o nerz neuze, c'hoaz eur wech, d'ho C'houi, am eus adoret aman war ar C'halvar; Eus treuzo ar bed-all d'an env pa rin eur zell, Gret ma larin : « Me eo, kredik oan... Ho! me wel! »

G. G.

Mad da voullan :

Zant-Brieg, ar 17 a viz du 1908.

Y.-M. AR PENNEC,
Vikel-vras.

DIWARBEN SEVEL BUGALE SENTUS

Eur vam hag he merc'hig

Setu ama petra c'hoarvezas eun deiz dirak ma daoulagad an eun tiegez etre eur vam hag he merc'hig seiz vloaz.

— « Mam, roit d'in eun aval. »

— « Petra 'zonzez 'ta, paour kezig? N'out ket fur a-walc'h! Bremaik e oas gwall-glanv; ar medesin en deus difennet ouzout ar frouez; evit sur, n'ez pezo ket eun aval. »

Ar verc'hig a stag da grignonaz.

— « O! ne dalv ket d'it... Lavaret em eus d'it n'ez pije ket : Nan eo nan! Ententet mat e teus ac'hanon, neketa? »

Ar gouela a zav hag ar vam a chench ton.
 — « Gwelomp 'ta, va merc'hig kez, fellout a ra d'it koueza klanv a nevez? Me asur d'it n'hell ar frouez beza nemet noazus ouz da yec'hed. »
 — « Nan, an avalou a zo mat, la! »
 Ar vam a chench c'hoaz ton evit tenna eus penn he merc'hig ar c'hoant da gaout eun aval.
 — « O! na te 'zo eur verc'hig vat! Deus ama da gaout da vam, diskonez ez out mignon d'az mam! »
 — « Nan, n'ez in ket, c'houi 'zo da vad o klask ober poan d'in, ro peoc'h d'in! »
 Ar vam drouk-laouen he gourdronz : « Gwelit ar pezig divalo. Na pell eo da veza brao ar pez a rez aze! Ah! n'ez karan mui, n'out mui eus an ti-man. »
 — « Me na ran forz a ze », eme ar verc'hig, e-kreiz kriall forz.

Neuze, ar vam, war don unan o rei eun urz beunak d'ar re 'zo dindanan, a lavar : « Selaou, hirio goude tout, mes hirio hepken, e plij ganin roit d'it eun tammig eus an aval-man : mes evit ar wech diaveza e vezo. »

— « N'em eus ket ezom eus an tammig nemet ken » hag en em laka da yudal gwasa ma hell.
 — « Ah! n'ez teus ket ezom? Mat! n'eo to ket an tanva anezan » a asur ar vam diroutlet neat.

Ar verc'hig kez en em lak da befolli, da dripal gant kounnar. Hag ar vam, treac'h d'ez ar verc'h, a zeu da zouja da frouden he bugel dizen ha di-respet, en eur lavaret : « Ma Doue, pebez krouadurez, gouest eo da ober daoni eur zant! Dal, setu aze da aval... debr anezan, ma karez, ha ma vez klanv, gwaz aze d'it! »

Hirio an deiz, e klever alies, sionaz, ar gerent oc'h en em glem, dre n'int ket mui doujet, respitet gant o bugale. Petra 'zo pen-kaoz a ze? Meur a dra, mes dreist-holl, dre ma plegont re alies da froudenno o bugale, pere a zeu dre an hent-se da veza pennou fall. Da biou ar faot? D'ar gerent, rak eas eo kompren penaos ar ger nan eus a-berz penn eun tiegez, ma ne daly ket eur nac'h, eun difen griez, e ve ar c'hrouadur red d'ezan beza gwall-diskiant ma ne wel e tenio, e vam, e dad, d'hel lezel d'ober e beun, war bouez enebi dalc'hmad.

KELEIER EUS AR BED-OLL

Henchou bras Frans. — Gout ouzoc'h petore hed an eus hell henchou bras Frans, ma vijent laket holl peno-ha-pen? *Kant hanter kant mil leo!* Ha pegement e koustet ober ane? Pevar miliar ha daou c'hant milion, da laret eo, peder gwech mil milion ha daou c'hant milion ouспен. Ober pep leo a goustas, wel-waz, tregont mil lur; en henchou ledanan, e koust pevar ugent mil lur al leo; — er re disteran, c'houezek mil.

Lazet gant eun aer. — Eun den eus Sant-Flour, en Auvergn, a oa o c'hori e forn, pa deuas eur pikol aer ermeaz eus eur feusken c'hôr a oa o paouez teurel er forn. An aer a yeas ebarz manch ar fornier, hag a 'n em bakas endro d'e vrec'h. Kaer 'n evoa hijal, ar : aer a grogas ennan ha na zistagas ket, c'han ma oe troc'h et a bezioù gant eur gontel. Ter eur goude, an den paour a oa maro.

Afer Steinheil. — Setu aman eun afer hag a zo embannet breman en pevar c'horn ar bed-holl : afer Steinheil.

Nosvez an 30 a viz mae, eu eul lec'h en Pariz hanvet ru-dall Ronsin, e c'hoarvezas eun torfed. Eul liver hag a chome eno, Steinheil, e vam-gaer hag e wreg, gant eur mevel, Couillard, a oa deut di 'vit tremen an noz, da c'hortoz dizrei adarre d'eun ti-all o devoa war ar meaz. Mes d'ar beure, pa zavas an de, hini ebed eus an dud na zavas nemet ar mevel. Al liver hag e vam-gaer oe kavet lazat, ar wreg stag war he gwele ha hanter-vouget.

Ar polis a diredas. Kavet e oe goulou boues-tiou hag e oa enne, arôk, perlezeunou ha mein talvoudus. Laret e oe eo laeron o devoa gret an tol. Ar mevel n'an evoa gouveet netra. Ar wreg, an itron Steinheil hepken, he devoa gwelet ha klevet eun dra bennak. Laret a reas he devoa gwelet tri den hag eur plac'h en he c'hambr, da greiz an noz;

ar re ze o devoa staget anei, lazat ha laeret endro d'ei, ha tec'h et hep ober kazi trouz ebet.

An dud a zonjas daoust perak ar wreg na oa ket bet lazat. Ar polis a 'n em lakas da glask an torfetourien. Ar wreg a laras e krede oa ar re-man darn eus an dud a deus da di he den 'vit servijout d'ean da skouer da livan. Goude e lavaras oant tri den gant livitennou 'hirr hag eur plac'h bleo ru. D'an drede tol, e hanvas daou den-all hag e tonas oa ar re-ze oant. Mes bep gwech e skoe koste; neuze e tamallas d'he mevel ha da vab he c'heginerez. Ar re-ze eo an daou diwean a zo bet er prizon. Ha piou oa an torfetour? Ar wreg hi hec'h-unan! N'e ket hi a reas an torfed, mes ray a reas dorn d'hen ober.

Hirie 'man er prizon an dorfetourez euzus-man. Mes diwar he fenn e sav brujoù-all. Tamallet eo d'ei ive he devoa ampeozonet prezidant ar Republik, Felix Faure, d'abarde ar 17 a viz c'houevrer 1899. E oa hec'h-unan gantan pa oe skoet, nebeut amzer goude bean et en eur gambr ganti, yac'h mat. Brud a zo e oa paet gant ar Judezien 'vit distrujan ar prezidant, abalamour ma oa eneb da Dreyfus.

An treo-ze holl a deu breman war var hag a lak reveulzi etouez pobl Pariz, ha, zoken, er broioù estren, rak disadorn e vije gwerzet pevar real en Berlin hag en Brusel, ar c'hazetennoù eur gwenneg, neve arru eus Pariz.

Eun dra soezus, en afer-man eo gwelet ar polis pegen fall an eus gret e labour. Ar polis, poulzet gant ar gouarnamant, a glask mougan an afer : daou c'hazetenner eus Pariz eo o deus gret d'ar wreg Steinheil anavez he zorfed, ha n'e ket ar varnerien. Ar varnerien, betek breman, n'o devoa zerret nemet ar re a vije tamallet gant ar pez fall-man.

Frans dilerc'het. — 'Vit al listri brezel, 'vel 'vit kalz a dreo-all, Frans a zo dilerc'het bras.

Ar Bail, depute ru eus ar Finister, an eus renket anavez er Gambre e oamp breman pell warlerc'h an Almagn. Aboue ar bla 1899, da laret eo, aboue 10 vla, an Almagn he deus gret ugent lestr brezel neve; en Frans, eme Ar Bail, aboue 1899, 'zo bet gret nao neve, ha c'hoaz 'zo bet kollet unan ane. an Iena, hag eun all, an Henri IV, n'eo mat da van : 'Benn ar bla 1911, an Almagn, hag a ra ter lestr neve bep bla, he devo 28; ni a choimo gant hof seiz. 'Benn ar bla warlerc'h 1912, hon devo ive c'houec'h neve, ha setu penôs 'n em gavomp neuze, gant trizek lestr brezel (cuirassés) eneb da 32 an evo ar Prus.

A hendall goût a rer boue pell 'zo penôs arme an Almagn, war douar, 'zo pell niverusoc'h 'vit hon hini, p'eo gwir an Almagn he deus 60 milion a dud hag a ya bepred war geski, ha ni n'hon deus nemet daou-ugent milion hag a ya bemde war vihanat.

Laket ouспен omp gouarnet gant tud ha n'ou-zont nemet eur brezel, brezel ar Seurezed, ha n'o deus interest ebet nemet interest o godel; laket ouспен penôs en Almagn 'zo eur penn hag eur mestr, da laret eo eur roue, hag en Frans n'eus na penn na mestr, p'eo gwir 'omp en Republik; pouezet neuze an treo-ze holl, ha gwelet pesort tu eo ar c'hrenvan.

Priziet gant Akademi Bro-C'hall. — E Pariz ez eus eur gevredigez vras branvet Akademi, hag a ra daou sort labourion, an eil mad hag egile fall. Labour fall a ra an Akademi o sevel war skriva ar galleg lezennou luiet ha diskiant a zo eun torr-penn hag eur c'holl-amzer da vugale ar skolioù ha d'ar re-all ivez. Labour vat a ra o rei prizioù da dud onest, dreist-oll d'ar re a westl o buez d'ober vad d'o nesa. Setu aman hanoioù ar Vretoned hag ar Bretonezed a zo bet priziet ganti hevlene : ar priejou Denes, Louannec; Charleza Keraval, Kemper; Loëiz Auffret, Penmarc'h; Marc'harit Ar Berr, Plistin; Marselina Maubian, Sant-Drian (Pen-ar-bed); Mari Breton, Moreac (Gwened); Mari-Ivon Creac'hioù, Landreger; Mari-Loiza Pichon, Ambon (Gwened).

Eur skouer vat. — Eur Breton o chom e kichen Pariz gant e dud, a skriv d'imp ez eo maro e dad hag e felle d'ezan, pa n'hall ket distrei, e relegou da Vreiz-Izel, lakaat da vihanan war e vaen-be

eur geriennoù bennak e yez ar vro. « Eun enor hag a dle plijout d'hon anaon kez, emazan, eo hennez. Gant-se e vo gret aman skrivan war maen-be va zad e brezoneg. »

KELEIER EUS AR VRO

BREIZ-UHEL

STOL. — Torfed. — Dimeurs, da unnek eur hanter, Per Luco, eus Treveneuc, a zo bet kavet lazat ha laeret, stok da gar Portrieux. Da unnek eur, war greiz an de, eo bet gret an torfed. Luco an evoa warnean 400 lur. Eur men goloet a vad a oa 'n e gichen.

TREVEREC. — Displegaden ha skeudennou war burzudou Lourd. — Dimeurz kentan, eiz a gerzu, da c'houec'h eur noz, e vo graet e Treverec, eun displegaden gant skeudennou eus ar burzudou c'hoarveet e Lourd adalek an de ma en em ziskoueas ar Werc'hez da Vernadet betek hirie. Klozel e vo ar gouel gant skeudennou finvus, pe sinematograf.

LEVRIOU NEVE

Goulen e ti-moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner, Sant-Brieg :

Aviel katolik, gant an aotrou abad BILER, dre ar post.	4 real.
Pipi Gonto, gant Din Na-Dor, dre ar post.	29 gweuneg.
An teir c'had hag ar Mevel laer, dre ar post.	5
Tog Jani ha pôtr e vragou berr, dre ar post.	6

Kement Breizad a gar e Yez hag e Vro a dfele kaout en e di al levrioù-ze, aman ar priz ane ken marc'hat mat ha ma hall bezan.

Gant an daou levrig diwezan, e tigoromp eur rummad levrioù nevez a vo dalc'het gant an laket d'an izelan priz ma vo gallet.

Kavet e vo, er rummad-levrioù-ze, oberou a bep sort, dreist-oll peziou-c'hoari, kontadennoù, kentelioù war histor ha sent ar Vro.

Ma teufe hon mignoned da c'houlenu ane stank a-walc'h, e vefe moulet al levrioù-ze bep an amzer, rekiz-mat.

Galvet int d'ober berz ha... vad, 'zo gwelloc'h. O erbedi a reomp start d'hon mignoned.

E GWERZ

TIMBJOU BRETON

Timbjou breton eus ar braon a bep lion, warne skrivet pep seurt giñou a skouer vat evel : *Doue va vro Breiz. Dalc'hoimp start bepred 'vit Breiz,* hag all, a zo en gwerz en *Kroaz ar Vretoned*, 'vit mad *Breweriz ar Brezoneg.*

Pemp timb evit eur gwenneg, hag eur gwenneg 'vit ar fréjou-kas.

War greiz an timbjou-man e ve peget an timb gall.

E GWERZ :

An Teir C'had hag ar Mevel laer

daou bez-c'hoari farsus dastumet gant KLAODA AR PRAT.

Peziou koant ha mat tre da vean c'hoariet gant pôtred yaouank ar patronajoù.

Al levrig : pevar gwenneg.

A bep tu e teu d'imp goure'hemennou evit al levrig-ze a zo lennet betek e Bro-Wened. Setu aman ar pez a skriv d'imp eul lenneez vat a Wened : « E tan a zigemer ar *Mevel laer* hag an *Teir c'had*. Brau! Entreu ar Prat, hag inour d'oh! » Tregeriz ha Leoniz, ne chomomp ket warlerc'h ha lennomp, ni ivez, oberou hon mignoned mad Klaoda. Dudi a zo a-leis ouz o lenn.

'Bone 'n eus 'n em laket an dud diwar ar meaz da digeri o geno war tud ar c'hériou, evit gallout ober evelte, komz evelte, 'n em fichan evelte, n'eus ken tra divalo ebet ha ne ve gwelet etouez ar gouerien. N'o deus ken giz ebet d'e o-unan; gizioù an otrone a renkont da gaout, hag o re i a loskont da vont gant an dour. Evelse 'zo digouezet gant ar paour kez Boned, eun dra ken dereat ha ken brao, ha n'an evoa gret droug ebet, a dra zur, keit ma oa bet war bennou ar vugale. Biskoaz 'n an evoa laket an tangu en o fenn, gret an evoa? Mes pa ve c'hoant da grougan ar c'hi, ve laret 've klanv. Laret 'zo bet d'ar Boned : « Kerz endro, te zo re ger ! » Re ger? Biskoaz, epad n'on ped kant vla eo bet ar Boned o kurunenni bleo melen bugaligou Breiz, biskoaz ne oa bet kavet ar si-ze ennan. Re ger? Ya, mes n'e ket diouz ar yalc'h, mes re ger diouz ar garante a doug ar mammou da gizioù koz o Bro, re ger diouz an interest a dougont da gonverz o Bro. Ar Boned a roe labour da galz a gemenezed en hon farouziou diwar ar meaz; lies a blac'h yaouank a zikoure bevan gant ar bonedou, evel ma zo breman o vevan gant konverz ar c'houefou. Ha breman, da biou e kaset hoc'h arc'hant, mammou diskiant? D'eur « vadam » bennak eus ker hag a ra digas d'ei ha zokou eus ar *Seine-et-Oise*. ... Hoc'h arc'hant a gwita ar vro; an hini 'zo gwell dioutan a ra gwap ac'hanoc'h.

Ha neuze,

Pep Bro he giz,

ha pep Bretonez vihan he boned; eno 'man ar wirione, eno 'man ar vravente! Penos 'ta, ma Doue, pa vo gwelet dre-holl memes tra, pesort plijadur vo ken o vevan war an douar? Pesort plijadur a gav d'ac'h am ije me, ma vijen Parizian, da zont aman en Breiz, epad an haav, da welet tokou ha gwiskamanchou 'vel en Pariz? N'ouzoc'h ket penos ar pez a denn ar muian an estranjourien da vale war an tu-man eo ar gwiskamanchou? Me laka aman diou barouz, 'vel pa digouezje *Lanon* hag *Ar Skaer*. Daoust en pehini ane en em gav bep bla ar muian a gonverz, ar muian a estranjourien? *Lanon*, 'vel kalz-all en hon bro, a zo eur gerig divalo, n'he deus na stumm na neun; *Ar Skaer* a zo eur bourkig koant, elec'h ma kaver c'hoaz gizioù ha gwiskamanchou koz. Di, am c'hredet, en em denno bepred an estranjour, dre mac'h er hepred tressek lec'h ma ve neventi ha didu.

Pebz joa e vefe gwelet ar merc'hedigon o hadkemer o bonedou gwechall, hag o tilezel an tokou distum, a rent ane henvel ouz galomperezed? Rak, ma ne den ket ar boned war e giz, piou oar hag-en ne renko ket ar c'houef koac'han ive divezatoch dirak an tog?

Gwelet neuze ar merc'hed yaouank, 'vel e weler ane en koste gall, o vont sul-gouel gant tokou d'an oferen? Hursani a ran o sonjal e c'hallfen, en em amzer, gwelet eun dra ken divalo!

Kurunen ar Bretonezed

Eo ar c'houef hag ar boned.

Pa welan dirakon eur plac'h gant eur boned, pe eur plac'h yaouank gant ar c'houef laket brao war he fenn, — n'e ket war choug he c'hil, — e santan ma c'halon o laouenaat 'vel pa welfen dirakon skend hon Breiz-Izel o tremen.

Mes pa welan merc'hedigon ha merc'hed yaouank en o bleo pe en tog, e sav ma c'halon oute. Doue da drei ane diwar ma hent ha da bellat dioute ar bôtred yaouank!

Pôtr e voned-ru.

Herve glevan, eo deut breman ar c'hiz er c'hériou da dougan peziou pikolo tokou ledanoc'h 'vit rer eur podhouarn. Bet 'zo gwelet eur plac'h o vale gant eun tog hag an evoa trizek troatad a dro!...

Jani, ar bla-man, 'vit heuilh ar c'hiz, a renko eta lakat ar billig krapouez war he fenn da vont d'an oferen.

P. E. V. R.

GWALEN AN HENCHOU-HOUARN

An trêniou o 'n em dourtal

Ma talc'h an trao da vont war an tu ec'h eont, hep dale an henchou-houarn na vefont ken nemet eur walen evit ar Vro, ha den na gredo ken bale enne.

Setu aman an darvoudou c'hoarveet aboue an 28 a viz du, da laret eo, pevar de so.

Disadorn diwean, endro d'ar Mans, en *Sille-le-Guillaume*, tren Pariz a oa bet dizroet er gar 'vit rei plas da hini Brest da dremen. Mes ankouaet oa bet zeri al linen lec'h ma oa dizroet tren Pariz, ha hini Brest a yeas warnan hag a frikas ar gwe-turiou diwean. Er re-man e oa zoudarded. A drugare Doue, darn ane a oa diskennet e traou. Etouez an tri lazet, 'zo eur zoudard eus Plien. Seiz a zo bet gwall-c'hlozet.

Ar memes de, en kreiste Frans, eun tren a diroudeunna o tremen war eur pont. Al lokomotiv a goueas en toull; ha tud a oe gwall-dapet.

Ar memes de, tren Lyon da Naoned a diroudeunna hag a zalc'has da vont gant al linen epad eur c'hart leo. Neuze e pozas. Aman n'eus kollet nemet arc'hant, gant an distruj a zo bet.

Ar memes de, en *Etampes*, eun tren marc'hadourz hag a oa bet pozet da c'hortoz mont pelloc'h, a zo bet et e-kwit anean e-unan. Ar mekanisian hag ar re-all a oa et da evan bep a vanne.

Pa dizrojont, 'oa kollet an tren. Elec'h d'erc'hel gant al linen vras, an tren, dre chans, a Croas war eul linen-all, hag a diroudeunna neuze, an eil gwetur o vont war eben. Ugent gwetur a zo bet d'raillhet.

Disul da noz neuze, de eiz eur hanter, an tren a ya eus Sant-Briek da Roaon a oa pozet en Montfort, pa goueas war ar memes linen gantan eun tren marc'hadourz o tont a du Brest. Diou wetur a oe stlapet ermeaz al linen ha kalz a veajourien a oe glozet, kalz pe nebeut.

Loened ive a oe lazet.

Al lizerou n'arrujont en Sant-Briek hag en Gwengamp nemet da diou eur goude kreiste.

Dilun, eun tren marc'hadourz o tont eus Pariz, e-kreiz ar vougen, a oe diarbennet en *Versaill* gant eun tren beajourien eus Tro Pariz hag a vruznas ar gweturiou diwean. Ne oe ket a dud lazet.

Da diou eur goude kreizle, ne oa c'hoaz na tren, na lizerou, na kelo en Sant-Briek.

N'e ket a-walc'h. Da unnek eur noz, tren Brest arru etre *Bellevue* ha *Sèvres* a zo bet helpennet gant eun tren-all. Ar veajourien a oa 'vel zod, o c'harm e-kreiz an noz.

Ne ouier ket c'hoaz pegen gwaz eo bet an darvoud-man.

Adarre!!

Da dek eur, e tigueo kelo en Sant-Briek 'zo c'hoaz c'hoarvezet eun darvoud *dimeurs* da noz, wardro ter eur hanter, endro d'ar Mans, gant an tren a deu eus Pariz da hanter-noz.

Pebz gwalen! Ha petra 'zo kiriek da gement a wall-euriou? Darn a lar eo ar c'houersou, dreist-holl, konverz an avalon an eus luiet ar gariou hag eo an holl vicherourien daoubennet ken n'ouzont ken war he tu mont. Darn-all a lar n'houll ken ar mevelien senti ouz ar mestrou; ar mareman, pac'h a an dorn da vont, war an Ouest, gant ar gouarnamant, ar mestrou koz nan eus ken a zoujans evite.

Darn-all a lar c'hoaz e zo re a everien e-touez ar mekanisianed ha tomerien.

E GWERZ: Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real; — 11 real dre ar post.

Skriwan d'an Otro CLERC, kelenner Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

Peziou neve gant Dir-Na-Dor

POTR E VRAGOU BERR -- TOG JANI

(ar pez-man bet d'ean an eil priz en Plougastel).

Peziou gret, an hini kentan, evit pôted yaouank pe krennarded, an eil evit merc'hedigon.

Al levrig: 5 kwenneg, 6 gwenneg dre ar post.

Ar re a gemero meur a hini, 'vo gret d'e disken priz.

Setu aman peziou berr hag ezet da c'hoari; n'eus ket ezom a wiskamanchou kaer na koust ebet 'vit o c'hoari. A-hendall eun dra beo int, fentus ha skonerius war an dro.

Breman, epad ar goanv, er patronajou hag etouez ar vugale hag an dud yaouank, eman ar gwellan koulz da zeski peziou hag a ray dudi ha plijadur kement o gwelo.

Perak ne gavfer ket pôted yaouank hag 'n em glevfe etreze da zeski peziou evel ar re-man, re Klaoda ha re Dir-Na-Dor, ha d'o c'hoari er parouziou?

O digoll o defe, ha vad a rafent d'e o-unan ha d'ar re-all.

Memes tra, ar merc'hed bihan a hall deski ezet bras eur pezig evel *Tog Jani*, gret ispisial evite, eur pezig fentus hag ennan eur gentel c'houek.

'Vit c'hoari ar pez-man, petra 'zo ezom?

Peder blac'h vihan, eur banerad pilhou, tri pe bevar dog plac'hed, eur boned hag eur mezellour, ha netra ken.

'Vit c'hoari *Pôtr e vragou berr*, eur c'hoz vragou, eur gegel, eul letern, diou pe der skudel hag eur gwiskamant paket 'n eur doubier.

'Vit c'hoari ar *Mével laer*, n'eus ezom nemet daou bôt, ha netra ken.

Ar gwiskamanchou, er peziou-man, a zo holl 'vel war ar meaz.

Hasomp eta prenan ar peziou neve, ha d'al labour raktal, *ma tevio pep parouz da gât he strollad c'hoarierien ha c'hoarierzed, hag eun tam diduamant eur wech an amzer d'ar sul.*

TOLET PLE MAT!

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a rajat mat 'n em asuri gant ar *Savojarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paean eiz gwenneg dre vil nebeutoch 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Ar *Savojarde* a ra, ouспен, kement asurans a zo, asurans tan, asurans tud, asurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherourien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri mitez pe mevel, pe tud implet diadanan a dle kas kelo da E. AR MOAL, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Ar *Savojarde* a glask tud 'vit ober asuransou en arondisamant Gwengamp.

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vruudet: *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN O

Le Gérant: F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broiou estren hag evit ar Broio keltiek.

RENERDOEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labouriou).
AR YEODET-BOCHER.

EMBANNOU-KONVERZ HA KOUMANANCHOU

An Aotrou TONNELIER, 27, ball Charrier, a zigomer anezo

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Emaez An Geiz.
Gant brezonek eo lout ar feiz.
Gant ar galleg eo aio a Vreiz.
Emaez An Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho prezoneg
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar foiz eo : ma ve troc'het,
Ouspenn ar Vez, e ve Poc'he di
Milan.

ALI

Kroaz ar Vretoned a zav evit Nedeleg eur c'hrog etre he lennerien.

Rei a ray prijou d'ar gwella marvailhou a vo kaset, benn an de kentan 'r bla da E. Ar Moal, 27, ball Charrier, Sant-Briek.

Pep-hini a ray e labour war ar seurt a garo, nemet ne vo ket ennan ouспен 250 linen, hed linennou Kroaz ar Vretoned.

Levriou brezonek a bep seurt vo tost 'vit prijou.

AR VUGALE HAG AR BREZONEG

Eur mignon a skrive, n'eus ket pell, da Groaz ar Vretoned, en em gave en e barouz merc'hed bihan hag, elec'h lakat en lod ar gwenneien o deve bep sul gant o c'herent, a vir ane da brenan Kroaz ar Vretoned.

Gant bugale evelse, ar Brezoneg, a drugare Doue, a die dont da hadvevan.

Hanoiou neve 'vit Breuriez ar Brezoneg

Eus Tremel, tri : Josef ar Sec'h, eus Sant-Voris ;

Albert ha Denis Mignot, eus Kerauel ;
François André, eus Kerdudavel.

Eus Sant-Mikel Gronwell, unan :

Francine Quénech'du, eus milin Botcanou.

Trugare da gerent ar vugale-man ha d'ar mignoned o deus roet hent d'e da zont en Breuriez ar Brezoneg.

Breman, er goanv, eman ar gwella koulz.

**Ar Brezoneg er skol
hag « Emgleo ar Skrivagnerien »**

Hor mignon ha kenvroad ker, Jos Dirlem, kelenner e Landivizio, en deus kaset al lizer a zo aman warlerc'h d'an aotrou Kaourantin An Nourz, skrivagner ar *C'hourrier du Finistère* :

Landivizio, an 30 a viz Du 1908.

Aotrou skrivagner ar *C'hourrier*, Brest.

E diveza niveren ho kazeten e lennan eur pennad-skrid war ar Brezoneg war baper hag er skol. Kemeret a ran ar frankiz da respont d'eoec'h eur gerig bennak diwarbenn an dra-ze.
Komz a rit eus eur vodadeg gree e Plougastel-Daoulas da goulz kendalc'h K. B. B. : eur vodadeg evit klask reiz a Brezoneg skrivet.

El loden-ze eus ho pennad e fell d'eoec'h lavaret ema pôtred Treger o reiz a an ortograf hep goulenn kuzul ha sklerijen skrivagnerien Leon. Ze 'zo eur fazi braz ! Be wech ma vez gree eur vodadeg gant *Emgleo ar Skrivagnerien*, pôtred Leon : a vez pedet da zont, ha be wech meur a hini anezo a deu. Er bodadegou-ze o mouez a vez selaouet koulz hag hini eun all. Morse skrivagnerien Leon n'eo deus bet d'en em glemm e vefe troc'het o c'haoz d'ezo.

E Plougastel, Leoniz o deus savet o mouez. Mes goude respont eur gramadeger gwiziek a Dreger, n'eo deus kavet netra gwelloc'h d'ober nemet...

selaou hag en em lakaat a du gant an aotrou-ze, abalamour m'edo ar wirionez gantan. E bodadegou E. A. S., aotrou, ar frankiz a zo respetet : pep den en deus gwir da zevel e vouez, forz ha pa ve Leoniad pe Dregeriad.

O veza ma 'z eo an aotrou abad Clerc hag an aotrou Ernault gwiziekoc'h war an ortograf eget skrivagnerien Leon, ar re-man na glaskont ket ober lezennou d'an daou zen gwiziek-se. Mes evelkent hepred e savont o mouez, pa welont ha pa gavont eun dra bennak kam... ha raktal e vez eünet.

Aotronez Treger na reont ket eta reizadur an ortograf drezo o-unan ; mes a-du gant an darn vrasa eus skrivagnerien Leon... ar re o deus bolantez vat !

Lezomp breman, mar kirit, an ortograf ha pôtred Treger a gostez, evit gwelet ar pez a livirit diwarbenn ar « vioc'h », eul loen skrivus mar deus !

Me 'zo krak ha berr enep ar « vioc'h » ! Eur vez eo e ve kavet eus ar seurt traou-ze c'hoaz en eur vro zevenet en Ugeutved kantved !... Ar « vioc'h », kement en enor e Breiz, na vefe ket zoken gouzanvet er broio gonez !...

Ar re a ra implij eus al loen-ze en o skolioù a c'heller da renka, hep aon, e-touez enebourien Breiz hag ar Brezoneg. Daoust ha n'eo ket eur griserdi a-berz ar mestr-skol gwelet anezan o rei an tam housarn toul-ze d'eur Breizad yaouank war zigarez ma komz ar yez en deus desket war barlen e vam ?

Ni, mistri breton, a c'houlenn holl ma komz ar vugale galleg epad ma vezint er skol, hag o alia start a reomp d'en em zervichout hepken eus ar yez-se etrezo, en o c'hoarioù... Mes biken n'hon do ar galon da rei eur binijen *vezus* d'eur c'hen-vroad bihan kablus da veza komzet yez e dud ! Daoust hag eur bugel evit beza lavaret eur ger brezonek en deus gree eun torfed ?

N'hellan ket tremen, aotrou, hep lakaat dindan ho taoulagad eun nebeut linennou a dennan diouz eul levrgwiziek braz, gree gant an abad J. Aurouze, doktor-el-lizeradur. O komz diwarbenn ar « vioc'h », an aotrou-ze a skriv :

« On pourrait croire que nous parlons d'un autre âge et de choses depuis longtemps emportées par les souffles modernes.

M. de Berluc raconte avec beaucoup d'humour comment le *Symbole* lui fut appliqué maintes fois dans sa jeunesse. Dans le numéro du 7 janvier 1894 de l'*Aïoli*, qui est l'organe mistralien, nous lisons :

« Parler d'inquisition, de carcan, de question, serait employer de bien grands mots, c'est vrai, cependant n'y a-t-il pas dans les procédés employés contre la langue d'un peuple libre quelque chose qui légitime la métaphore? »

Ha breman daoust hag ar « vioc'h », roet d'ar vugale a gomz brezoneg, a zong frouez ken puilh ha ken mat ha ma livirit ? Lezit ac'hanon da gredi ar c'hontrol. Me gred kentoc'h eo er mod-se e tesker d'ar vugale dont da veza spierien, flaterien (délateurs), evel ma lavare ken mat va mignon Klaoda, e Plougastel, oc'h en em harpa war *Pédagogie régionaliste* an aotrou Aurouze, pehini a lavar :

« Outre qu'il a le premier tort d'enseigner, d'organiser et d'imposer l'espionnage et la délation, ce procédé est, comme toutes les persécutions, aussi inepte qu'inefficace : la violence n'a jamais été un excellent moyen de persuasion.

Malgré toutes les défenses de ses maîtres, l'enfant apprendra et parlera toujours son dialecte natal, parce que c'est sa véritable langue maternelle, la seule qui convienne parfaitement à la disposition atavique de ses organes et répond exactement au milieu dans lequel il vit (2). »

(1) *Pédagogie régionaliste*, par J. Aurouze, docteur-ès-lettres, Avignon 1907.
(2) Tennet diouz an hevellevr.

E leac'h kastiza ha rei ar « vioc'h » d'ar Vrezonekerien yaouank, ni a gav gwelloc'h gopraat ha rei meulendi d'ar re eus ar vugale a laka o foan da gomz ar gwella galleg etrezo er skol. War ar poent-se e heuilhomp an ali roet gant André Mellac en e gazeten ar *Pays Breton* ha gant meur a zen-all gwiziek war an dra-ze.

Gwelloc'h ez a hepred en-dro ar vugale gant eur gomz vat bennak da rei kalon d'ezo eget gant eur binijen. Setu da vihana ar pez a lavar an darn vuia eus ar re o deus skrivet leonion war an doare d'ober skol (*traité de pédagogie*).

An nebeut sonjezonou-se, aotrou ha kenveur ker, a zo deut em spereid en eur lenn ho pennad-skrid. Pardonit d'in da veza kemeret ar frankiz d'o c'has d'eoec'h ; mes bezit sur n'o skrivan nemet evit difenn ar wirionez ha gwiriou ar yez brezonek, breset gant kalz a Vreiziz trubard.

Digemerit, aotrou skrivagner, va gwella mennoziou a genveur leal.

Jos DIRLEM,

Mestr-skol ha skrivagner breton.

Trugare d'hor mignon mat da veza diskleriet ker freaz ar wirionez war ar « vioc'h ». Ya, eun dra vezus eo ar binijen-ze ha na die ket ar gerent lezel d'he rei d'o bugale, war digare ebet.

WAR AN HENT

D'am Mignon Ar Yeudet-Bocher.

Meinek eo an hent, striz ha tenn :
War an daou gostez betek pean,
E sav drez a vodennadou,
Stankoc'h eget ar bokedou.

Sellit, hag e weloc'h daou zen,
A-hed an hent-ze o tremen :
Unan a bign gant ar greechen,
Hag egile 'zo o tisken.

An hini a bign en deus mall
Da zigouezout gant an tu-all :
Ar c'houezan a ruilh war e dal,
Mes ne fell ket d'ezan gedal.

Redek a ra, 'vel o nijal,
Beteg ar ster gwenn o trouzal :
War e giz elec'h souza tamm,
Gant tiz a-dreist ar ster e lamm.

Nemet pa wel war ar c'hleuniou,
Ar spernen-wenn koant he bleuniou,
Neuze e c'hortoz eur pennad,
Evit kuitilh bleun a c'houez-vad.

Mes an hini 'zo o tiskenn,
Sellit pegen moal eo e benn :
Bale a ra, krommet e gein,
E dreid o stoka ouz ar vein.

Gant aoun ne deufe da goueza,
War e benn-baz e rank poueza :
Her gouzout a ra, mar kouezfe,
Biken mui sevel ne c'helfe.

An hent-ze zo evit pep den
Eus hent ar vuez eur skeuden :
O pignat ama Yaouankiz,
Ha c'hozni a deu war ha giz.

Eastig Kerineg.

ALI EUR DEN FUR EUS AR CHIN

An den fur Confucius eus ar Chin a oa kustum da lavaret : « Ne gomzit nepred diwar ho penn hoc'h-unan d'ar re-all, nag e mad, ne viot ket kredet, ha ma komzit e droug e vezo lavaret war ho penn muioc'h evit ma fellfe d'eoec'h.



AR GER VILLIGET

GANT
LAOUIK

(KENDALC'H)

V

Ervean Karadek a oa oc'h ober e studi en Pariz tri bla 'oa. N'an evoa ket gret evel kalz a dud yaouank, a studi eun tam bennak evit tromplan o zud nag a dremen al loden vras eus o amzer er c'hoario hag ar plijadurio. An deio kentan ma figoueas e oa jachet gant mignoned d'o heuilh, med ne oe ket pell evit gwelet pegen goulou e oa o bue.

Eur spered eun an evoa ha douget d'al labour. Santout a reas e tremenehe e amzer o ren eur vue evelse, hep dougen freuz ebet, hag e kwitaas hep-dale ar gompagnunez-ze. Laret e oe anezan e oa eun ourz, eur soured ha me 'oar petra c'hoaz ! med ze na re man d'ean : kaout a re frealzidigez e spered er studi ; e gonsianz na rebeche ket anean : n'an evoa ket ezom ouспен. Pa dremené avelio fall war e galon o lakat an dizurz enni ec'h e betek an iliz hag eno e kave ar peoc'h. Ne oa ket eus ar re-ze a lar :

« Me a chomo honest ha n'am mo ezom sikour ebet evit-se », (dirak ar bed skeul an honestiz he deus lies a baten ha pep-hini a vir anei gantan war e hini) ; hen a oa bet desket d'ean abred ez eo red evit miret ar gwir honestiz en pep kiz, kaout sikour Doue ha goulen a re anean.

Choantaet an evoa bean medesin evit gallout ober vad e-lec'h ma tremenehe ; fellout a re d'ean anaout e vicher ervad ha bean oa unan eus ar gwellan studierien.

E vistri a daolas ple dale hag a gennerze anean. Unan ané dreist-oll an evoa kalz a garante evitan hag a c'halvas anean da bealachui e studi gantan en hospital elec'h ma kavomp anean. Meur a wech en evoa laret d'ean, ma karche chom en Pariz, e tenche hep dale da vean pinvik hag anaveet, med hen n'entente ket ze.

— Nag e vefen paour ha dizanve em bro, a lare, di e fell din em denn ; he c'harante a zo re don em c'halon evit ma tilezfen anei ha gwell eo ganin lonzaoui tud ar mezio ma c'henvroiz evit otrone hag itronez Pariz.

E vestri a c'hoantaet direzi anean diouz ar zonzje, med koll a re e amzer. Kouskoude e telc'he d'ean kalz, rak hini na gemere muioch a lboan evitan gant ar glanvourien, paour kez micherourien an darnvuian ané. Hini na oa dousoch evite ha na frealze ant gwelloc'h gant komzo kalonek. Ouspen-ze pa c'halle e rente zervicho-all d'e c'hoaz, dreist-oll pa vijent Bretoned. Aezet eo gouzout eta pebez levenez a zantas o kaout war e hent eun den an evoa anaveet en e yaouankiz hag a oa mab da wellan merer e dad gwechal.

Kemer a reas e dok dal m'an evoa kwitaet Fanch ha mont ermaez eus an hospital. Pa 'n em gavas er ru an aer fresk a skoas e vizach hag a reas vad d'ean. Sellet a reas e vont.

— Eiz eur, emean, poent e d'in hastan founus evit tapout an oferen-bred goude ma zro.

An hospital a oa en eun tu d'ar ger ha ru ar Gar en tu-all. Eur c'hard leo frank an evoa d'ober a dreuz da ruio bihan ha louz.

Nan eus netra viloc'h na rukunusoc'h evit eur ger d'ar beure 'rok ma ve netaet. Ar ruio-ze ma tremene enné 'vat na welent ket skubelen ar c'han-tonier nemeur ; leun e oant a fank ; a lec'h da lec'h e oa bernio loustoni a bep sort restalet gant an tier hag en em 'ganne bagado chas warné. Ha gozik ouz peb fenestr, warsour gorden stiguet a dreuze e oa lieno ha bep sort treo-all o sec'han. A-wecho ec'h en em ziskouee dirak al lieno-ze eur plac'h hanter wisket, he bleo difoupet ha liou an dienez war he fas. Nebent a dud a dremene dre eno ; al lec'hio-ze o devoa brud fall ; ouспен-ze an den 'n e aez nag ar pinvik na blij ket d'e peurvuian kaout taolen an dienez dirak o daoulagad.

Erwan a oa kustum outi ha ne oa ket evit ar wech kentan e tremene dre eno. Pep gwech avad e sante e galon o serri o sonjal pegement eus a genvroiz a oa dent da gouean eno. Pebez bue drist o deus kavet e lec'h an evrusted a hunvreent ! Nag a hini an eus faziet evelse, ha, pa daolent

ple, en em zantent ziouaz, re diweat evit dizrei war o c'hiz ! Mar ne vije nemete da vihanan da c'honzanv ar bec'h eus o fazi, o bugale war o lerc'h a ve ive preiz ar ger villiget.

(Da heuilh).

LAOUIK.

KARANTE WAR AN TU-GIN !

D'ar garante ez omp douget,
Ewit karout ez omp krouet,
Karout aman war an douar,
Karout eun de ebarz ar gloar !

Na kaerat tra 'haller da gât
Ez eo eur galon reizet-mat,
Pe 've en eur c'hastel ganet,
Pe dindan doen-blouz kuzet !

Karout a lar 'n em rei dalc'hmad,
Hag e pep lec'h klask ober vad,
Gout an tu da bellât poaniou,
Pa ruilhont, gôut sec'han daerou !

Hevelep karante a bad ;
Ne velg na gant klevenet na oad...
Honnet, 'fat, n'eo tam karante
A baouez da garout eun de !

Mes nag a dud a ve faziet,
Nag a galon, en em roet,
A 'n em wel ankoet, dilezet,
Goude bean da vat karet !

Laret oa d'ei : « O, me ho kar,
A-dreist pep tra, war an douar !... »
Komzou flour hag a herlinke
Ar galonig paour a gare !

Ya, gwirion 'oa ha c'harante ;
Ar galon-ze 'oa digor-tre
D'an hini, gant e gomzou flour,
Harze da welet eun treitour !

Henvel-mat ouz eur vleuen splan,
E kuze 'r pikou 'oa dindan ;
Hag an treitour-ze, den fall-tre,
Metan e-unan na gare !

Evel ar preuv, lous e vunum,
O label, a rum-da-rum,
Ar bleun koantan, an treitour-man,
A glask koll c'hoaz re-all breman !

N'eo ket 'vit bean mastaret,
'Doa kouskoude he mam garet
Laket er bed ar bugel-ze !
Diouti pell ar sonj-ze neuze !...

Nan, n'eo ket 'vit bean kollet,
'Devoa ar c'hatekiz heuilhet,
Hag eun de, hi, lorc'h mam ha tad,
Lakat daero 'n o daoulagad !

Gwelet breman 'n he daoulagad,
Daero hi, ken yaouank a oad !
Dirak he zi an evn a gân,
Hag 'n he c'hreiz 'zo eur mor a boan !

Hunvrete 'devoa evrusted,
Karante, ha kat 'vel pried
Eun den an nije he c'haret !...
An holl dreo-ze 'zo diskaret !

Kenavo, yaouankiz evrus,
Kenavo, lec'hio dudiuz,
Elec'h c'hoarie didamall,
Kenavo, levenez gwechal !

Ha breman, c'hoarig an aele,
Nan eus forz pelec'h e vale,
E kav d'ei, poan meurbet kalet,
Gant ar biz bean diskwelet !

Evrus eo c'hoaz ma 'teu d'ei,
Etrezek he c'hrouer distrei,
Ha gant pedenno ha daero,
Gwalc'hi he fec'hed ken c'houero !

Bretonezed ha Bretoned,
Laket start-mat en ho spered,
Kement-man : Gouelan 'lec'h c'hoarzin,
'Ra karante war an tu gin !...

G. D.

MADALEN

D'am Mignon mad E. B.

Gant ar wenojen voan a gas, a dreuz parkou,
Betek he c'herig koant kuzet 'barz ar roziou,
Madalen diarc'hen, he gwel war lein he zal,
A gerze gogregik, he spered o sonjal :
Bremaik, er ger vras, en Templ, he deus gwelet
Eun den burzudus kaer : Jezuz e ve hanvet.
D'e gomz, an den seizet a gerze pare mad,
Gant eur zin d'an den dall e rente daoulagad,
Ha yec'hed, bue, nerz a skuilhe d'ar c'hlanvan
Pep reuz ha pep glac'har a dec'he dirakan.
Sellou gwec'h e lagad, e gomzou kalonus,
Oa enne eun donster, eur glanded dudiuz,
Ma tene an holl bobl, zoken ar vugale,
D'heu klevout o kuzuilh e lezennou neve.

'N he c'halon, Madalen 'zo gwasket, strafilhet :
E zellou gant he re bremaik 'zo 'n em gavet,
Pa oa hi aketus o selaou e lezen...
Evel eur men stlapet en deun gwag eur feuntin
A lak an douer en berv hag ar pri da veskan,
Lagad skler « Den an Templ » an eus, en eur baran,
Treuzet hec'h ene-hi, ha skuilhet an drubuilh,
'N he spered, 'n he c'halon a oa er fank o ruilh !
(Rak Madalen 'deus gret, epad he yaouankiz
'Met sotran he c'hened, he friellan iskis !)
Oh ! zellou an den-ze, oh ! nag o deus flemmet,
Nag o deuz tizet don hec'h ine kailharet !
P'o deus paret warni, he dije karet kuz,
Mes o glanded ken splan a oa flour ha stagus.

Ha Madalen 'n eur vont a-hed ar wenojen,
A zonzj, a zonzj bepred en zellou glan an « Den »...
An evned, er girzier, a gan soniou seder,
An heol a guz er mor 'n eur zistan e domder :
Kaerder ar pardaerz-noz a zo fresk ha dispar...
Mes en kalon ar plac'h e tihun eur glac'har :
Eur vouez 'n he c'hreiz gwasket a glemm, a ouel

[sioulik,
Hag a lar truezus : « Petra 'teus gret, merc'hik ? »
Madalen 'zo mantret !... 'N he c'hoaze er yeod glac,
He fenn 'tre he daouarn, e van da zonzjal c'hoaz ;
Ha bepred e klev mat, aze, en he bruched,
Da bep stokad he gwad ar rebech ken kalet :
« Petra 'teus gret, merc'hig, en es pue heuzus ? »
Da gened, da c'hlanded, gwallet, sotret spontus !
Ha dre ma klemm ar vouez, Madalen, trubuilhet,
A zant o tigeri he c'halon ken mac'het ;
Eur voren deo a deu da vougan d'ei he gwel ;
Mes bepred diraki eur skeuden a luskell,
Dalc'hus 'vel eun tamall, ha tener kouskoude,
Skeuden « Den an Templ » gant e zell a drue.
A greiz holl, an daero, daero dru ha bervet
A gouez sioul war barlen ar plac'h paour glac'har...
Trec'het eo he c'halon !... « Oh ! emei, me oa dall,
Me oa kollet, siouaz, diskaret gant ar fall !
Ah ! me a gave d'in 'oa mau drek ar bed-man ;
Ne zonzjen ket, paour kez, 'vije stlapet en tan
Ar wezen dizec'het a ruilh war an douar !...
Ha me, ken brein a ruilh, ha pell-zo... o glac'har ! »
Ha Madalen a ouel, hag he hirvoud mantrus
A ziston er zaouenn 'n eun hekleo ken poaniuz,
A sko, 'kreiz ar pardaerz eun anken ken kalet
Ma tav en o zoniou an evned sebezet...

Hag en nenv ar stered a zigor o lagad,
'N eur vouc'hoarzin d'an heol a ruzia o kwitat.
Hag ar plac'h, hec'h-unan, gant hec'h enkrez

[c'houero,
Hec'h-unan er roziou, a ouel a skuilh daero.
Ah ! breman 'oar ervad perak sellou Jezuz
Pa oant stiguet warni 'oa ken melkonius !
Betek deun he c'halon e furchent peb bolzen,
'Vel eur bann-heol, er c'hoad, a furch en peb boden.
Oh ! kri o doa kavet stad direiz hec'h ine,
Pa deuas war o zouster eur voren a drue !...
Mes Jezuz, marteze, gant e c'haloud ken braz,
Eus he c'halon frailhet an evo true c'hoaz !
Marteze, 'vel ma lar, ec'h eo kannad Doue,
Diskennet er bed-man gant eun lezen neve.
Oh ! neuze e c'halle, gant eur gomzig hepken,
Renti d'hec'h ine baour he glanded gwerc'h ha

[gwenn !
Ar glanded-se, biken nan anveo kailhar,
Na pa de 'n he bue peb maro, peb glac'har !...

En spered Madalen, digor d'an dizesper
Ar zonz-se a luc'has 'vel eur sklerder dener,
Raktal e sav 'n he zav, dazorc'het, kennerzet ;
War he zremm bremaik ken poaniet, ken krizet,
Douster, peuc'h eur spi grenv a luf flour ha skedus.
He bleo da dispaket gant an avel joaus,
'N eur ziruilh war he zal, a zizer'h he daero :
« Ya, emei, mont a rin ! Jezuz am fardono ! »

Eun troc'her-lann.

Fentigellou

Ar chas na reont ket vijil

Eun dervez gwener, er c'houraiz, eun den yaouank doareet mat a zeu da azeza ouz taol da vare ar pred en eun hostaliri. Hogen eun tam brao a gi-chase e oa d'e hent.

Beajourien-konvers en em gave o leina ouz an hevelep taol gantan. Ar re-ma, o veza taolet pled ne zehre an den yaouank nemet boued vijil, en em lakeas d'ober gwap outan e keit ma tebrent kig ejen ha kig maout, evel na vijent bet o klask gouzout pion en dije debret ar muia.

An hini a ranke beza ar brasa lakipod anezo a lavaras d'an den yaouank : « Ha permetet, aotrou, e rofen an eskorn-ma d'ho ki, goude ema ar gwener ? » — « Sur mad, aotrou : ar chatal a zebr kig e pep amzer ! »

J. C.

Mimi ar plac'h fin

Mimi n'eo ket bet fur a-walc'h en oferen da zeiz ar pardon bras. Abalamour da-ze he deus aon, pa vezo lakeet ar madigou war an daol da fin lein, n'he defe he lod. E gwirionez, deut fin ar pred, ar vam a ginnig madigou d'an holl, nemet da Vimi. Abarz fin ar pred e lavar d'ezhi koulskoude : « Mimi, ma ho pije bet eur verc'hig vihan hag he dije dizentet ouzoc'h, great poan d'eo'h, petra ho pije lavaret d'ezhi ? » — « Mad, mam, me lavarfe d'ezhi : Va merc'hig keaz, hirio ho pezo c'hoaz madigou evel ar re-all, mes bezit fur en amzer da zont, ne zizentit ket mui ! »

AN EURUSTED

Beza 'zo eun evn brao,
O chom pell diouz hor bro ;
Gwechoù en eur dremen,
Hen a stok ouz hor penn
E askelligou skanv,
'Vel 'r gwennili en hanv.
Buhan, buhan e nij :
'Ze d'hor c'haron na blij.
An evn-se eus an ér,
Eurusted a hanver.

J. C.

KELEIER EUS AR BEZ-OLL

Tier gir nevez. — En Amerik edo ar c'hiz betek en sevel tier uhel-uhel, d'ezo betek daoungent hag hanter-kant solieradur. Setu e klasker ober a-hend-all breman. Emeur o kleuza (n'eo ket sevel a reer ar wech-man) eun ti ha d'ezan c'houec'h a zolieradur dindan an douar.

Eur bugel abred. — E Boston, en Amerik, eur bugel dek vloaz, hanvet Sidis, a zo bet digemeret en eun skol a uhel-studiou, an uhela a zo en Amerik. Pa ne oa c'hoaz nemet pevar bloaz ar bugel-ze a ouie komz freaz peder yez.

Laeron-ilizou o kas ganto kloc'h eun iliz. — Ar zizan diweza, laeron o deus karzet eun iliz e Pugetville, tost da Doulon. Ne oe ket a-walc'h ganto lemmel kement tra prisius a hellent tizout, diskennet o deus war-bouez eur palank ha kerden unan eus ar c'hleier ha kaset anezan ganto en eur c'harr.

Ar c'hilhotin a zo miret. — Bet 'zo vot er Gambi, dimeurs, da c'hout ma vije miret ar boan a varo 'vit an dorfetourien, pe mar ne vije ket.

Tri c'hantunan ha tregont « ya » a zo bet enep da daou-c'hant hag unan « nan ».

Miret 'vo eta ar c'hilhotin.

Gant ma vo impliet ive ! Ne rafe ket a droug.

An hostalirioù. — Komz a rer bemde eus bihanat an niver eus an hostalirioù. Gret 'zo ar gont ane en Frans, hag e zo kavet wardro pemp kant mil. En hon departamant, e konter eiz mil tri c'hant, da lazet eo, eun hostaliri dre bep dek ha triugent a dud. Peder gwech re !

KELEIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

BREST. — Laeron divergont o kas laerez eur c'hanol. — Dirgwener diwezan, war-dro deg eur noz, laeron a dizas, dre heskenna barriner ar gloued, mont e-barz unan eus ar gwikadellou (pe forts) en em gav en-dro da Vrest. Tennet o devoa eur-maez, d'e lakeat war eur c'harr a oa deut ganto, eur c'hanol en arem, o poneza pevar c'hant lur, pa zigoueas eur ofiser o lakeas da dec'hel.

TREGER-GOULO-KERNE-UHEL

KASTEL-PAOL. — Korent dinatur. — Ar zizun-all e oe galvet dirak ar varnerien e Montroulez eun den harvet Foucreau hag e wreg. Eur Gall eo ar Foucreau-ze, deut da Gastel eus ar broiou-kreac'h da labourat eno war e vicher a blonmer. Tamallet e oa d'ezan beza merzeriet e vugel, eur pôtrig seiz vloaz ha d'ezan eun ear klanvidik ken e tiskouez beza pepar pe pemp bloaz hepken. An enklask a zo bet en deus displevellet e oa gwir an tamalladur ; merzeriet e oa ar paour kaez bugel en eun doare spontus. Foucreau a zo bet kondoaonet da dri bloaz prison hag e wreg da c'houec'h miz.

BONEN. — Klenved stagus. — En koste Bonen, Grol, Plougerneve, e zo deut, neve so, eur c'hlenved, ar red-korf, hag an eus gret rum en lies a diad tud. En eun ti 'zo marvet pevar gantan, e berr-amzer. Kredi rer e teu ar c'hlenved-se eus an evaj fall.

GWENGAMP. — Gwasoc'h 'vit en Pariz ! — Digwener, ar mer hag e gonsailh, e-touez kalz a dreo-all, o deus votet e vije roet bep a bistolen garget da bôtred ar polis, ar re ane a vo war bale an noz en ker. An « apached » a vo mat d'e souzan o c'harr en e loj.

Divêvet. — Stéphan, devejer en ti Neumajer, marc'hadour koat, a oa krakveo, ha bepred e felle d'ean mont endro d'an hesken, en despet d'an holl.

Mont a reas, mes re dost e lakas e viz hag e oe troc'het moust. Ar gentel a zo rust.

BREIZ-UHEL

SANT-JILI-AR-MENE. — Diner ar veleien. — Parouz Sant-Jili-ar-Mene, koste Coline, a dalv ar boan komz anezi. Ar bla-man, war eiz kant dek a dud, 'zo bet dastumet eno eiz kant dek lur. Pa laran, dastumet, e laran gaou, rak n'eus bet den ebet o kestal. An dud, war c'houlenn ar person, o deus digaset o arc'hant d'ar sekretiri.

En Sant-Jili-ar-Mene n'eus otro na bouc'hiz ebet, 'met labourerien holl, hag ar beleg a ra ter gest ar bla, aman, ed ha neud.

E GWERZ

TIMBJOU BRETON

Timbjou breton eus ar braoan a bep lion, warne skrivet pep seurt girioù a skouer vat evel : *Doue ra viro Breiz. Dalc'homp stard bepred 'vit Breiz*, hag all, a zo en gwerz en *Kroaz ar Vretoned*, 'vit mad *Breweriez ar Brezoneg*.

Pemp timb evit eur gwenneg, hag eur gwenneg 'vit ar frêjou-kas.

War greiz an timbjou-man e ve peget an timb gall.

LEVRIOU NEVE

Goulen e ti-mouleriez Sant-Gwilherm, 27, bal Charner, Sant-Brieg :

Aviel katolik, gant an aotrou abad BILER, dre ar post. 4 real.
Pipi Gonto, gant DIR-NA-DOR, dre ar post. 29 gwenneg.
An teir c'had hag ar Mevel laer, dre ar post. 5
Tog Jani ha pôtr e vragou berr, dre ar post. 6

Kement Breizad a gar e Yez hag e Vro a defe kaout en e di al levrioù-ze, eman ar priz ané ken mare'hat mat ha ma hall bezan.

Gant an daou levrig diwezan, e tigoromp eur rummad levrioù nevez a vo dalc'het gantan ha laket d'an izelan priz ma vo gallet.

Kavet e vo. er rummad-levrioù-ze, oberou a bep sort, dreist-oll peziou-c'hoari, kontadennou, kentelioù war histor ha sent ar Vro.

Ma teufe hon mignoned da c'houlenn ané stank a-walc'h, e vefe moulet al levrioù-ze bep an amzer, rekiz-mat.

Galvet int d'ober berz ha... vad, 'zo gwelloc'h. O erbedi a reomp start d'hon mignoned.

E GWERZ

Peziou nevez gant DIR-NA-DOR

POTR E VRAGOU BERR -- TOG JANI

(ar pez-man bet d'ean an eil priz en Plougastel).

Peziou gret, an hini kentan, evit pôtrd yaouank pe krennarded, an eil evit merc'hedigou.

Al levrig : 5 kwenneg, 6 gwenneg dre ar post.

Ar re a gemero meur a hini, 'vo gret d'e disken priz.

Setu aman peziou berr hag ezet da c'hoari ; n'eus ket ezom a wiskamanchoù kaer na koust ebet 'vit o c'hoari. A-hendall eun dra beo int, fentus ha skouerius war an dro.

Breman, epad ar goanv, er patronajou hag etouez ar vugale hag an dud yaouank, eman ar gwellan koulz da zesk peziou hag a ray dudi ha plijadur kement o gwelo.

Perak ne gavfer ket pôtrd yaouank hag 'n em glevfe etreze da zesk peziou evel ar re-man, ts Klaoda ha re Dir-Na-Dor, ha d'o c'hoari er parouziou ?

O digollo o defe, ha vad a rafent d'e o-unan ha d'ar re-all.

Memes tra, ar merc'hed bihan a hall deski ezet bras eur pezig evel *Tog Jani*, gret ispisial evite, eur pezig fentus hag ennan eur gentel c'houek.

'Vit c'hoari ar pez-man, petra 'zo ezom ?

Peder blac'h vihan, eur banerad pilhou, tri pe bevar dog plac'hed, eur boned hag eur mezellour, ha netra ken.

'Vit c'hoari *Pôtr e vragou berr*, eur c'hoz vragou, eur gegel, eul letern, diou pe der skudel hag eur gwiskamant paket 'n eur doubier.

'Vit c'hoari ar *Mevel laer*, n'eus ezom nemet daou bôt, ha netra ken.

Ar gwiskamanchoù, er peziou-man, a zo holl 'vel war ar meaz.

Hastomp eta prenan ar peziou nevez, ha d'al labour raktal, *ma tevio pep parouz da gât he strollad c'hoarierien ha c'hoarierzed, hag eun tam didramant eur wech an amzer d'ar zul.*

E GWERZ :

An Teir C'had hag ar Mevel laer

daou bez-c'hoari farsus dastumet gant KLAODA AR PRAT.

Peziou koant ha mat tre da vean c'hoariet gant pôtrd yaouank ar patronajou.

Al levrig : pevar gwenneg.

A bep tu e teu d'imp gourc'hemennou evit al levrig-ze a zo lennet betek e Bro-Wened. Setu aman ar pez a skriv d'imp eul lenneez vat a Wened : « E tan a zigemer ar *Mevel laer* hag an *Teir c'had*. Braut ! Eutreu ar Prat, hag inour d'oh ! » Tregeriz ha Leoniz, ne chomomp ket warlerc'h ha lennomp, ni ivez, oberou hon mignoned mad Klaoda. Dudi a zo a-leis ouz o lenn.

DEVEZ EUR VATEZ EN PARIZ

(Troet en brezoneg diwar ar Pays Breton)

Digant eul lenner

Pariz ar 24 a viz Du 1908.

Otrone Renerien,

Ma sonjet o deus ar Vretoned o vevan en Pariz galloud evit kelen o c'henvroiz chomet en Breiz, war ar pez a zo ouz o gortoz aman, me gaso d'ac'h an tenor eus devez eur vatez en Pariz.

Ar vatez-man a zo en ti mestrou kristen, — n'e ket 'vit o meuli, — ha war he gopr eo divizet ec'h eio d'an oferen naou er bep sul. D'ac'h da laret breman hag-en e c'heuilhont gourc'hemen Hon Salver : skanvaat bec'h an nesan.

Bemde, ar Vretoned-man, hec'h-unan-penn, he deus 15 kambr da netaat, c'houec'h er c'houec'hved estaj ha nao er bevere. Sonjet nag a boan eviti : d'ac'h ar c'hambchou hag an treo a zo enne, pignal er binchou gant sammon, eus ar c'haou, elec'h 'man an avalo-douar hag ar glaou, betek ar bevered pe ar c'houec'hved estaj, ar pez a ra seiz estaj. Ne gomzou ket eus an disken. An disken eo da diskviz ar plac'h paour hag hec'h holl blijadur 'pad an de.

Bep sun, ve red kannan ; bep beure, netaat dek re votou ; goude-ze, redek d'ar marc'had ha d'ar stalioù ; kas dimezel an ti d'ar skol, ha koll 'velse, well-waz, eun hanter-er bemde. Barz ar gegin tregont kasteloden kouevr da dorchau ha da burat ; sonjet nag a « dripoli » ve red ha nag a « eoul brech ! » Daou-ugent metr a zo eus ar gegin d'ar zal-dibri ; nag a hent d'ober en eun de, dreist-holl, ma sonjet 'zo diou doliad da zerviji bep kreiste ha diou geusteuren d'ober. Da goan, ne ve nemet eun doliad, an holl a debr memes tra ; merket eo gant an Itron e c'hallio ar vatez mont da nao eur hanter da gousket.

Mes nag ar pemp boutailh dour tom da lakat er gweleou ? Nag ar gweleou da zizoloi ?

Nag al listri da walc'hi, dek kontel, dek loa, dek fourchetes, dek gweren, ugent plad ? Nag ar glaou da gargan ar c'helornioù ? Penôs mont da gousket da nao eur hanter ? Farsal a ret, itron !

'Vel didnamant e-kreiz he labourioù, ar vatez he deve frikoioù d'ober a-wechou, 'vit mignoned he mestrou ; pa ve fall an amzer, nag a fank na deu ket da heuilh o zreid ! Bann vo lakat breman leuren ar c'hambchou 'vel eur mezellour, 'vo bet labour !

Mes an er vat hag al liberte 'zo gret 'vit an dud koulz 'vel 'vit al loened ; bep sul eta, liberte 'vit ar vatez, eus diou eur da c'houec'h eur ; eur zul war bevar, e c'hallio mont da goanian ermeaz.

Ha petore gopr 'vit kement-all a labour ? Hanter-kant lur ; eur bern arc'hant, pa zeller ouz ar pez a c'houneer war ar meaz ; mes ne chom ket kement-se bep miz e godel ar vatez ; red eo d'ei prenan louzeier, gwin nerzuz ; anez se e tivife diwar he zreid. Pa vo gret ar gont eus hec'h holl dispignou, ne gredan ket e talvefe he hanter kant lur an ugent lur ar miz a'hallfe gonnit o chom en Breiz.

Gant se, eo red c'hoaz tol evez e teuer da dapout klenvejou, e teuer da goll e nerz, hag e reuker neuze dizrei d'ar vro pe mont d'an hospital. Gir Brizeuk a zo gwir mat :

« O ! ne dilezet ket, kredet pa laran d'ac'h, toul an nor 'lec'h e c'hoariemp gwechall ! »

MOREAC

« MARI PADRUN »

Setu aman eur Vretoned ha n'e bet biskoaz en Pariz, ha koulskoude he deus eno gwelloc'h brud evit Breton ebet eus Pariz. An Akademi he deus roet d'ei eur priz a vil lur, evel hon doa lakat aman ar zun-all. Ar zun-man e teufomp adarre war he zro 'vit kontan eun tammik he bue.

Mari Breton, lezhanvet Mari Padrun, abalamour d'ar mestr eman matez gantan hag a zo e hano Joakim Padrun, a oe ganet ar bla 1841 ; bean he deus eta 67 vla.

Adalek an oad a seiz vla e oe kaset da zerviji. Goude bean bet dek vla a di da di, e koueas en ti Joakim Padrun, labourer en Moreac. Ne oa eno nemet tri bla oa, pa deuas he mestrez da vervel hag he mestr da chom intanv gant tri a vugale yaouank-flamm.

Joakim Padrun na oa ket eur gwel den, mes kontan hag evan bannac'hon a yee gantan gwelloc'h 'vit labourat. Perc'hen m'eri Padrun, o welet an ozac'h pen-diberc'hen, a oe nec'het o sonjal ne vije ken paet da ouel Mikel, hag en em gemeras diouz ober d'ean kwitat. Kwitat an ije renket ober, panevert d'e vatez. Mari Breton a oa adalek neuze eur plac'h a benn hag a galon seurt ne weler ket. Hen diskoue a reas. Setu hi o vont da Wered, 'vit bean digemeret en Trade-Urz sant Fransez, hag oc'h ober dirak Doue an tri le a ra ar venec'h, gwerc'hded, paourante, sentidigez ; neuze e tizroas dinec'h da gat he mestr, prest da 'n em westlan d'ean ha d'e vugale, hep aon ne vije gwall gomzet ken diwar he fenn, hi, plac'h ugent vla, o chom da vatez gant eun intanv yaouank c'hoaz.

Kentan tra a dolas ple d'ean oe ar gouel-mikeleze. Padrun, pan ije gwerzet eur penn-zaoued pe eun aneval kezek, a renke bep gwech boulc'han e arc'hant en hostalirion. A-wechou c'h e pell ganti. Mes ar vatez yaouank n'intente ket treo evellen ; kement a reas o c'hoardrouz, kement a reas, dreist-holl, o kelen dre he skouer, ken e teuas Padrun da lakat d'ei eun de e yalc'h en he barlen : « Dal, emean, gwelloc'h voint ganit 'vit ganin ! » Ar pez a deuas da wir pen-da-zen. Mari a zastumas klenk an arc'hant, a lakas lod ane er c'hef espern, a reas ar prenanioù hag ar pae-manchoù. Gwenneg ebet d'an ozac'h, nemet gwerz eur chopinad jistr bep sul, kwit a windardant, avad ; rak Mari Padrun na aa ket 'vit gouzanv c'houez ar gwin-ardant na a-bell nag a dost.

De ouel-mikel, pebez levenez eviti pan halle mont gant hec'h arc'hant en he dorn da baean an « otro » ; a-wechou e renke kemer diwar he gopr da beurober ar gont ; n'eus forz, lorc'h a vije enni pa lavare d'an « otro » 'n eul lakat e arc'hant d'ean en e zorn : « Ha breman, pedet ma mestr da verrenn ganac'h, pa garfet. »

M'eri Padrun, renet 'vel ma oa, a deuas da vean ar gwellan eus ar vro.

Ne oa neb lec'h ken kaer an treo, ken lard al loened, ken teurgn ar menaj, ken zart an dud hag ar vugale, ken dru ha ken mat ar geusteuren, ken rik ar pae. Dre-ze, holl devejerien ar vro a oa helibini etreze kas gont piou a yaje daved Padrun hag e vatez vihan. Hi, koulskoude, ne oa ket mat an holl eviti ; n'houlle nag eus an everien nag eus an dud didalve ; eno, en ti, pa gave d'ei vije bet evet trawalc'h, e serre ar boutailhou er pres, hag an alc'houe en hegodel.

Ne blijte ket d'ei ive gwelet chom da droieta. pa vije labour breset. Eun devez ma oad o tornan, ha ma chome an ozac'h hag an devejerien re bell holl da vutunat, Mari a dapas eur freilh hag an em lakas hec'h unan-penn da fustan war an ed ken ma klenkas prim ar bôtred o c'hernioù ha ma teujont d'al labour mezek.

Mes Mari, pa oa he micher bean penn-tiegez, a renke zoursial ive eus ar vugale. Tri a oant da zevel ha da skola. Mari a roas da bep hini ane eur reolen, arabad ankouaat netra diouti ; klanv peyac'h, ober a reas an dro d'e seurt 'n ije ket gret mamm ebet gwelloc'h ; deski a reas ane war al labour hag ar menaj... Gounet e oent ganti ; pa varvas an tad, ar vugale n'houljont biken en em dispar-tian diouz an hini an evoa zervijet d'e da vamm, ha hirie, Mari Breton, deut da vean unan eus an ti, ken eo bet lezhanvet Mari Padrun, a zo e zervij ar vugale he deus savet hag a gelen ane bepred, pa ve ezom.

Hogen, ha c'houi laro pegement ar bia he deus ar vatez.

Eur vatez seurt ganti, eur vatez hag a zo kement dreist ar mitizien-all, a die, a dra zur,

emezoc'h, bean paet keroc'h evit ar re-all ? Mari Padrun he deus bet adalek ar bla kentan betek hirie ar gopr a ugent skoed ar bla, ugent real ar miz, ha c'hoaz ar gopr-ze na vije ket paet dalc'himad, ha c'hoaz diwar ar gopr-se e kemere a-wechou da beurchui gouel-mikeleze he mestr, ha c'hoaz diwar ar gopr-se, gopr eur plac'hig saoud, he deus kavet an tu d'ober aluzennou bras.

Gant hec'h arc'hant hi he deus savet eun em-zivadez baour ha desket d'ei he micher ; gant hec'h arc'hant he deus maget eun dall koz eus hec'h amezelen, paour ha goloet a c'houlou.

Ouspen, Mari Padrun a oar ive rei he foan evit man : mar oc'h paour, kaset d'ei ho tilhad du bep sun, ha hi a ganno ane d'ac'h ; Mari Padrun eo kannerezh ar beorien.

Ar mil lur an eus roet Akademi Pariz d'ar wreg dispar-man n'int ket nemeur a dra, e kichen ar pez he deus gret. Ar seurt gant Mari Padrun na veint ket paet war an douar. En ne eman he gopr euz he gortoz.

Ha petra da lavaret diwar gement-man, lenne-rien ger ?

Penôs n'e ket an dud « interestet », 'vel ma lavarer hirie, eo ar re wellan, nag ar re a ra ar muian a vad, nag ar re a lez war o lec'h ar c'haeran skouer. Ma vije bet Mari Breton eur plac'h « interestet » eviti he-unan, he dije dilezet he mestr, ha klasket eur plas-all 'vit gonnit muioc'h. Dimezet 'vije bet, goude bean serret eur yalc'hadig arc'hant, ha bevet he dije, 'vel al loden vras eus an dud, hep ober nemeur a droug na nemeur a vad.

Mes Mari Padrun na oa ket eur plac'h « interestet », ha setu perak he deus gret kalz a vad en he bue ha tennet warni grasou mat an dud uhelan, ha, kaeroc'h c'hoaz, grasou mat Doue.

Tud re « interestet », me ho ped, tolet eur zell war vue Mari Padrun.

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paeen eiz gwenneg dre vil nebentoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezomnek.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement assurans a zo, assurans lan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherourien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri matez pe mevel, pe tud impliet diadan an a die kas kelo da E. AR MOAL, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou en arondisamant Gwengamp.

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.*

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarioù ha mein-besioù

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN O

Le Gérant : F. GOUETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'HOUMANACHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
3 skod evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

REWERDEN :

E. AR MOAL, (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

KERANNOU-KONVERZ HA KOUMANACHOU

An Aotrou TORRELLIER, 27, ball Charner, a zigemer anezho

Ar brezonek hag ar feiz.
A zo breur ha c'hoar en Breiz.
Furzez An Geiz.
Gant brezonek eo dindan ar feiz.
Gant ar galleg er aio a Vreiz.
Furzez An Geiz.

Dalc'hil bepred d'ho prezegon
Yez an dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve troc'het,
Ouspen ar Yez, e ve Pec'hed!
Muzik.

ALI

Pedi a reomp start ar re a lako c'hoari ar peziou brezonek moulet en Kroaz ar Vretoned 'vel Ar Mevel laer, Tog Jani, hag all, da c'houlenn diganimp ar peziou-se da werzan e-keuz o gouel.
Ar muian ar gwellan.

KANAOUENNOU EN YEZ TREGER

Eul levr neve dindan ar wask

War griski ez a bemdez niver al levrioù mat, skrivet e brezoneg reiz ha dudius da lenn. Skouervad Dir-Na-Dor ha Klaoda a daol frouez. Hag ouspen kentelioù freaz da ziski skrivan reiz e yez Tregar a gaver breman e levr dispar an aotrou abad Clerc. Heman eo ar gwellan eus ar vistri, rak kelen ha skouerian a ra war eun dro gant e yezadur hag e *Veaj Jeruzalem*. Eman o lakaat war ar stern skridoù o c'hoaz.

Eun enor eo evit Kroaz ar Vretoned gwelet er renk kentan eus ar re a gerz breman war an hent bet distankaet oute gant an aotrou abad Clerc, meur a hini eus he c'henskrivagnerien. Unan eus ar re garetan ane eo ar barz ampart a zin e labourioù dudius gant al lizerennou Y.-M. G. Pa fell d'ezan, dre izelegez, level e hano, n'hen disklerifomp ket d'hon lennerien hag, a-hend-all, anavezet a-walc'h eo Y.-M. G. ha .. brudet zoken. N'eus tamm ezom eus va fluennig d'e veuli.

Eman o paouez dastum, a ziwar e ganaouennoù moulet war *Groaz ar Vretoned* ha re neve-zavet gantan, danvez eul levr hag a vo deut mat, hon deus fizianz, gant an holl Vretoned, dreist-oll gant lennerien *Kroaz ar Vretoned*.

Al levr neve-man, eme an oberour en e gent-skrid, a zikouro neb e lenno da garout muioc'h Doue, da 'n em staga mui-ou-oui ouz e vro goant ha da danva gwelloc'h al levnevez a gaver o lenn pe o kanaan sonioù ha gwerzioù skrivet en hon yez dispar.

Al levrig-man n'eo ket graet evit bean lennet en iliz, daoust ma 'z eus ennan meur a gantik hag a beden, mes en korn an oaled, goude koan, arók ar pedennou.

Graet eo c'hoaz evit bean kanet dre ar parkeier, epad an hanv, evit sikour ar re a dremen o bue war ar maez da vean laouenoc'h ha da zilui o amzer, nan gant kaniou dizoue ha fall evel ma klevet re, siouaz, en amzer a ren, mes gant sonioù ha nan hallont blonsa kalon ebet.

Hag e het an oberour d'e levrig nove bezan digemeret e kement ti e Breiz-Izel, dreist-oll dindan an toennou-plouz, ma c'hallio hadan en kalon hag e spered ar Vretoned levnevez, furnez, frealzigedez ha karante.

Ya, e gwirione, gallet eo al levr neve d'hen ober; galvet eo da zidui hon c'henvroiz en eur ober vad d'e, gant ez eo skrivet ken kaer hag o virvi e kement linen anezan spered Breiz a-unan gant ar spered kristen!

Trugare, eta, d'an oberour d'e vezan savet ha ra gavo ar gwella digemer gant neb a fell d'ezan mirout, maga ha sevel, en hon bro ger a Vreiz-Izel, ar yez, ar feiz hag ar garante-Vro!

AR BOAN A VARO

Etouez ar re o deus votet er Gambr e vije c'houeet an tan er c'hilhotin, 'zo daon seurt tud : bean 'zo eur re, franmasoned, laeron kouenchou, laeron ilizon, dispac'herien, hag a garje gwelet ar c'hilhotin pùlluc'het, gant aon ne denfe, divezatoch, he c'hontel da gousean war o goug d'ober d'e paean o holl dorfejoù eneb ar Vro; bean 'zo eur rummad-all, hunvreerien re dener a galon, sperejoù losk ha digompouez, hag o deus roet o malloz d'ar c'hilhotin, abalamour n'houlont ket e teufe an den da skuilh gwad e vreur.

'Vel ma ouzoc'h, war bemp kant daon ha tregont vot, 'zo bet tri c'hant unan ha tregont a-du gant ar boan a varo. Ze diskoue e zo er Gambr tri-c'hant unan ha tregont den hag o deus aon da vean lazet dre zorn an torfetour, ha daon c'hant unan-all, pe dost, hag o deus aon da vean lazet dre zorn ar hourev.

Eus eun tu, tri c'hant hag o deus muioc'h a drue ouz ar re muntret 'vit ouz ar re a vuntre; eus an tu-all, daou c'hant hag o deus muioc'h a drue ouz ar re a ra ar muntre 'vit ouz ar re muntret.

Eus eun tu, tri c'hant hag a gred d'e an eus galloud ar Vro da lakat d'ar maro ar re a noaz outi en eun doare re gri; eus eun tu-all daou-c'hant hag a gred n'he deus ket ar Vro ar galloud-se war ar re muian dinatur eus he bugale, hag eman mad an torfetour hag e vne da lakat arók bue ha mad an holl.

Lennerien ger, gret breman ho sonj hag et en tu a garfet.

Vidon-me, a lavar bôn d'an tri-c'hant o deus miret dre o vot ar boan a varo. N'e ket mat d'imp loskat hon armou keit ma chomo armet an dorfe-tourien. Bean 'zo tud c'hoaz, 'vel ouzoc'h, hag a lar ive e tleje Frans lakat he c'hlezeier d'ober minevedou hag he c'hanolioù d'ober soç'hioù, abalamour rei skouer vat d'ar bed hag ober d'an holl rouanteleziou dilezel ar brezel; mes keit ma vo ar c'hleze en dorn ar Prus, daoust ha mat vije da Frans loskat he hini? Memes tra a c'hoarve gant afer ar c'hilhotin; ar sosiete a renk chom armet keit ma vo tud armet enep d'ei, ha c'houi oar e vo dalc'hmad torfetourien war an douar, rak natur an den a zo gouliet, adalek an de ma teu er bed.

Miromp eta ar boan a varo ha greomp impli anei gwech an amzer, pa 'n em gavo da vean gret torfejoù re euzus, 'vel ar re a c'hoarve ken alies en amzer-man.

Neuze, avat, labouromp ive a gorf roched evit distrujan an droug hag ar fallagriez, mammen an torfejoù. Klaskomp kement tu a zo da drei diwar hon gwennoù skouer hudur an holl siou hag an holl be'hejoù.

Miret ar boan a varo, abalamour natur an den a zo techet d'an droug, ha labourat 'vit ne vo ket gret kalz impli anei, rak an den a zo ive techet d'ar vad, pa ve kelennet, — setu eno, war ma meno, ar wirione.

N'e ket memes tra a hallfer da lavaret d'ar re a fell d'e harz ar brezel? Gretho kwellan 'vit bevan en peuc'h gant ar broioù-all, mes miret ho kleze ouz ho koste!

DIR-NA-DOR

WAR AR STERN :

BUE JANED ARK

levrig a 60 pazen
gant DIR-NA-DOR

GWILHAOUIG TAPET EN E LAS

Gwall d'abun a zavas, eun deiz,
Etre an houc'h goue hag ar bleiz.
Hema a lakas en e benn
Mika an houc'h 'harz ar voullhen ;
Mes, arók ober tol-esa,
E kavas fur mont, da genta,
Betek ar roue, al leon,
Evit klevet kuzul gwirion.
— « Mestr, emezan, petra d'ober? »
— « Stiguit lason d'an tabuter,
« Ha pa vezo enno reustlet,
« Debit anean hep aon ebet. »
War ze, ar bleiz kwit a dec'has,
Ha d'an houc'h lasou a stiguas,
Gant ijin, en eur wenojen,
Elec'h oa kustum da dremen.
Mes ar bleiz n'en doe ket a chanz :
Koll a renkas e dam bevanz ;
Rak, e kreiz ma skrigne, laouen,
Ay! e ra eur falz vachaden,
Kouea a ra ebarz 'n e las,
Hag hen flammet start, siouaz!
Eun amzerig, da c'houdeve,
Leon war al lec'h 'n em gave.
— « E leal, he! petra welan? »
— « Em lasou oun reustlet aman! »
— « Sur a-walc'h, eme egile ;
« Koulskoude em oa bolonte,
« 'N eur zont dre ama, d'az sikour
« Da zispen holl da enebour ;
« Evel ma 'z eo chenechet an traou,
« Ni az tebro a-bez hon daou. »
— « Penôs? Mestr-kez, n'hen grafet ket.
« Pa oun bet ganac'h kuzuliet!
— « Ne nac'han ket, 'lar al leon,
« Da holl gomzou a zo gwirion ;
« Mes memes kuzul 'm eus roet
« D'it ha d'az euehour tonet ;
« Memes tra eo evidon-me
« Disklipa pe bleiz pe houc'h goue! »

KENTEL

Ato ar venjanser,
A gav eur c'hastizer.
Difiziout a zo d'leet
Diouz alvokaded ;
Er prosezou em a
O afer, o bara :
N'eus forz piou a gollo,
Int 'deus o govr ato.

MOUSKOUL.

AR ZONIOU GALLEK

Er Vro miz kerdu, e lennomp ear pennad hag a gord en meur a doare gant ar pez hon deus lavaret alies diwarben ar zonioù gallek. Ar pez a lavar *Ar Stourmer*, ar skrivagner an eus gret ar pennad-se, a zo gwir : ar galleg a ra kalz a c'haou ouz ar brezoneg :

« An dud yaouank en hon amzer, emean, war zigarez ma c'houzont galleg fall, na blich ket d'ezo ken lenn ar brezoneg. Kona reont e galleg, e galleg Pariz, zoken, mar plich. Mes na ouezont ket e kanont e giz an hailbevedo o deus great ar zonioù-ze gant ar restachou eus ar galleg reizet mat.

Mes petra ra ze d'ezo, pe gwir e kavont ar zonioù-ze brao? Ha perak eo brao ar zonioù-ze, nemet abalamour ma 'z int karget a luc'hach, alies dizolo, a-wechou eun tammig kuzet?

Ar zonioù mezus eo a ra eta hirio plijadur ar yaouankiz e Breiz; ar zonioù na laokoent ket da c'hoarzin, na vez ket sellet outo.

Kement-ma a ziskouez pegen izel eo kenezet

KELIER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

BREST. — Eur c'habel-touzeg mentet iskiz. — Brestiz a estlamme, ar zizun dremenet, ouz eun tog-touzeg evel na weler ket nemeur, d'ezan tost d'eur metrad a dreuz hag o poneza eiz livr hanter. Kavet e oa bet war ar maez gant an aotrou Marchaix, medesin e Kerahez.

Lamet diwar ar bourz gant eun tarz-mor. — P'edo al lestr-brezel Requin o verdei etre Cherbourg ha Brest ar zizun-all, unan eus an ofiserien a zo bet stlapet er mor gant eun tarzad dour ha heuzet.

TREGER-GOLO-KERNE-UHEL

PERROZ-GIREK. — Eul lestr sovetaet. — Dingwener diwezan, epad eur barrad gwall-amzer ar vag-sovelaerez a renkas mont er-maez da gas sikour d'al lestr Anna a Lannou. Al lestr hag ar verdeidi a zo bet sovetaet.

PLOUNEVEZ-MOEDEK. — Tapet o kantreal. — Fransez Pichon, a Blounevez, a oa aet da glask labour d'an Normandi. Evit doare, ne gavas ket, rak tapet e oa o kantreal e-kichen Granville.

SANT-BRIEG. — Eul lestr-dre-dân gouledet. — Ar zun-all al lestr-dre-dân *Iolite*, o tont eus Glasgow da Zant-Brieg gant eur gargad glaou-douar a gollas e hent gant ar vougen deo a oa ha a yeas a benn ouz kerreg al Lejon-Bras. Torret eo bet dre an hanter gant an tarzou-mor; kollet eo breman da vad.

PERROS. — Labour divalo. — Labour divalo? emeoc'h. Daoust ha kasel ve e-kwit person Perros? Pe zerrit ar skol? Pe laeret c'hoaz eur rent-levé bennak digant anaon ar barouz?

N'e ket sur, n'e ket ze eo! Mes bean 'zo o c'houarn ac'hanomp potred hag a zo ken dibobell 'vel ma int digonsians. Pa deve c'hoariet o loa trawalc'h war eun tu, e chanchont kiz, hag e c'hoariot war eun tu-all.

N'ouzont; en gwirione, petra d'ober 'vit « didaoni » hon bro krec'h-traon. Setu breman petra 'n eus laket 'n e benn eun otro eus ar « ponts et-chaussées », ha na dle man ebet d'ar re zo o tispen an ilizou hag ar skolioù kristen.

Ma eo gwir gened Breiz eman lod anei en he fe, lod en he yez hag en he c'hizout, eul lod-all a zo en he zrevajou dudius, saonennou, meneioù, en he ocheon kelc'hiet ken kaer gant eonen gwen ar mor glas, henvel ouz eur gouriz arc'hant beo war ar gerrek rouz alaouret.

Trawalc'h a zo gret hag a rer bemde 'vit distrujan ar fe, 'vit dismantr ar yez; ma krog ver ive da labei da Vreiz he dremm ken kaer, fresk ha yaouank bepred, daoust pegen koz eo.

Piou 'n eus ket klevet, da vihanan, komz eus reier Ploumanac'h-ha Tregastel, plantet ken zoun ha ken galloudus ez-eün d'ar mor bras?

Aboue ma eo ar bed bed, ar reier-ze n'o deus flachet tamm; nag an arne, na nerz ar gwagnennou n'o deus gallet ober d'e fival; deut eo, dre hira amzer, ar mor hag i da vean 'vel mignoned; ar mor bias hag ar gerrek bras, testiou an amzer dremenet, a lavar d'an dud o tremen, galloud ar c'hrouer, hag a gas, a-bell-bro ar vrud a c'hened Breiz-Izel. Biskoaz den na zoujas stokan eur biz ouz ar reier; bean 'oant kazi 'vel eun dra zakr, en tu-hont d'o c'haerder. Hed oa d'imp dont d'hon amzer, amzeran dismantr hag an distruj, eun amzer hag e kaver enni tud gwiziek (!) ha n'o deus ket muioc'h a spered hag a doujans 'vit al loened mut; ya, red 'oa dont d'hon amzer 'vit ma vije klevet komz eus eun dra ken skrijus ha heman: eun otro an eus laket en e benn distrujan ar reier-ze hag ober gante eur vagor war od ar mor.

A drugare Doue, an den-ze n'eus ket c'hoaz gret e dol; daoust pegement a dud sod ve lezet hirie da vale, marteze, rôk 'n evo gallet skei e bigel en reier Ploumanac'h, 'vo bet kavet evitan eur gambr en Dinam.

Evelse bezet gret!

KERMARIA-SULARD. — Mision. — Eus ar zul, ar c'houec'h a viz kerzu, d'ar zul an trizek e eur mision kaer en parouz vihan Kermaria. An holl a anave pell a so parouz vihan Kermaria, rak roet he deus pell a so merkou skler eus he c'harante evit Doue ha Breiz. Eur barouzig eo, savet en kreiz eur stropad douarou mat, e-lec'h ma ve gwir Vretoned, bugale da Zoue, d'ar Werc'hez ha da Vreiz.

Hen diskoulet he deus dre ar mision, he deus heuilhat gant kement a garante hag a doujans prezezerien pen-da-ben.

Ar mision a digoras ar zul ar c'houec'h a viz kerzu. Ar brezezerien a oa tadou eus an dibab, a urz an tadon Maristed eus Sant-Briek. Bean oa an tad Ferlicot, an tad Tugual hag an tad Hery, akwit o zri.

Adalek an de kentan, Kervariats a so bet fidel d'o mision, heuilhet o deus pen-da-ben ar prezegeunou hag ar c'huzulioù mat a oa groet d'e, dreist-holl ar meurz. En devez-se e oa an devez kaerian evit an holl.

O vean ma tigouee Gouel Konseption didach ar Werc'hez Glorius Vari an devez se, an tad Ferlicot a reas sevel eun tron kaer d'ar Werc'hez vinniget, patronez santel Kermaria en kreiz ar c'heur. Alian reas ar Gristenien da gas, da gaerat he zron, pep a c'holoen pe pep a gantol-c'holo, evit diskoue o fe hag o c'harante en kenver Man Doue hag hon Fatronez. Eur baner a oa lakel da zigemer ar golo, ne oe ket pell evit bean leun, rak an holl a gase n'eo ket hepken kantelou evel ma oa laret, mes pakadennou. Lakeet oe ar goloioù endro da dron ar Werc'hez, ha zoken dre holl en iliz. Da beder eur dious an abarde, an tad Hery a biguas er gador, ha goude bean gret eur brezezen war galloud ha madelez ar Werc'hez Vari en kenver ar re a laka o fianz enni, e konzakras, da laret eo, e westlas d'ei ar barouz a-bez. Pa glevas ar Gristenien komz nerzus an tad Hery o westlan d'an Itron-Varia ar barouz hag holl dud ar barouz, ar c'halonou a deuas da deneraat hag an daerou a redas eus an daoulagad, ha Mari. Barouez an daerou, digar he zron alaouret, a zelle gant sellou tener an holl dud-se a oa endro d'ei hag a zoubie he fen, evit laret e tolje evez eus ar vugale-ze a oa fiziet enni. Karranta a zavas en kalon pep-hini evit an Itron-Varia en devez-se, hag holl, e prometjont a-gevred gant an Tad bean gwir vugale d'ar Werc'hez.

Enpad ar gonsekrasion, an holl c'holoioù a oa alumet, hag an iliz kaer a deuas da vean henvel eus eur baradoz, elec'h kan dudius ar Gristenien a deus da vean henvel ouz kan an Ele.

Ar merc'her, an holl dud a deuas evel an de arok da chilaou komzou nerzus an tadou, ha d'ar yaou e oe roet ar gomunion d'ar rummou kentan. Eno oa fe. Kaer e vije gwelet ar Gristenieu-ze o vont ouz an dol santel da zigemer o Salver, o Roue hag o Doue en o c'halon, goude bean 'n em breparet ken mat ha bean netaet o ine dre Sakramant ar Binijen.

Achu gant ar rumm kentan, d'ar yaou, ar vugale n'o deus gret pask'ebet, o deus bet ive o lod. Bet int ive o klevet komzou an Tadou, hag ive o walc'hi o ine en dour ar binijen. Ezom o devoa, rak ar bed breman a zo ken risktus hag ar vugale baour warnan ken zempl. Ma klevjent da vihana eur gomz vat bennak eur wech an amzer da generzi ane, neuze ar vugale a vije divezatoc'h kristenien vat, mes allas, ar bed a zo tromplous.

Fiout ennan 'zo gwall-risklus. N'eus forz, klevet o deus alion mat, ha derc'hel a rein' sonj ane, hag aben c'houec'h pe seiz via aman, deut ive da vean tud yaouank d'o zro, ar vugale-ze a gemero perz ive evel, ar re vitas hirie, en eur mision-all, hag e toulfont da vean divezatoc'h tud fur, kristenien vat, feal da Zoue ha da Vreiz.

Ar gwener hag ar sadorn an ekersisou a so bet heuilhet evel ma oa dleet.

An anaon paour eus ar purgator n'eo ket bet ive ankouaet; ar gwener e oe kanet eun ofern

lidel evite, ha meur a hini ive o deus gret eur gomunion evit o zud maro.

Da beder eur diouz an noz, e oe gret lidou ar Zakramant (meulet ra vezo): gret e oe ar prosesion en diabars an iliz ha douget ar Sakramant da ober an dro. Goude, an tad Ferlicot a zo pignet er gador, hag an eus gwestlet ar barouz d'ar Galon Sakr a Jezus, en eur c'houlen pardon digantan evit an holl bec'hejou e ve gret bemde en e genver gant ar Gristenien baour. Ken nerzus e oa e gomzou, ken ne oa ket an dud a oa o chilaou evit harz an daerou da ruial eus o daoulagad, dreist-holl, pa glevjent an tad o lavaret komzou tener Jezuz, en eur diskouel e galon: « Setu aman ar Galon he deus karek kement an dud hag a zo karek gante ken nebeut! » Diouis gwelet daerou ar Gristenien, e oa aezet goût e oa chilaouet an tad. Da achui an devez e oe gret Salut ar Zakramant (meulet ra vezo!) hag achu adarre an devez d'ar gwener.

Ar sadorn e oe gret an ekersisou evel an ordinal, ha setu deut devez ar zul, an devez diwean evit an holl. Pegen buan e tremen an amzer, pegen berr eo kavet ar zun, dreist-holl evit ar re o deus heuilhet ar mision evel ma 'z eo dleet. D'ar zul, da seiz eur, ofern ar gomunion evit ar rummad diwean. An holl dud eus ar barouz, me gred a zo deut breman da ober o mision. Kredi a ran ec'h int deut holl da zaoulinan ouz an dol santel, da zigemer Jezuz en o c'halon; n'eus chomet hini dizeblant en-kenver e Zalver biniget, rak holl o deus c'hoant da arruout eun de bennak er baradoz elec'h ma kavfont an evursted hag a bado da viken. Pep-hini an eus gret eus e vellan evit kavet eul loden e-barz ar mision ken kaer-ze ha pep-hini a zo breman evurus ha leun a levenez, hag ac'han da bell e vo klevet komz a ze etouez an holl.

Da diou eur, mision ar vugale vihan. Na kaer e oa gwelet ar vugaligoù-ze douget d'an iliz war vrec'h o mammou, deut da zigemer bennoz an tadou. Na int a diskouel ive bean evurus, pan-eo-gwir, mar galljent komz, o dije barouez an holl o vugale, goude a vezo, nemet gant ar joa; lavaret e vije o dije kentoc'h c'hoant da ganan, evit diskouel ive ec'h int kristenien, ele bihan an Otro Doue.

Kaer e oa c'hoaz gwelet ar vugaligoù-ze, rak ar re-ze eo gwellan mignoned an Otro Doue. Gwechall, ive pa oa war an douar, pa vije aesat pellaat ar vugale dioutan, e lavare d'an dud: « Lest, lest da dont davedou ar vugale-ze, rak ar re-ze eo ma gwellan mignoned; ha me lar d'ac'h, en gwirione, kement den an nevo c'hoant da gavet perz en rouantelez ma zad a zo en Nenv, a renko bean henvel ouz ar vugale-ze. » Setu aze komzou hon Salver gwechall.

Da der eur, gousperou ha sarmon diwean da glozan ar mision. Ne larin ket kals tra, nemet, pa lavaras an tad misioner e prezege evit ar wech diwean, daerou a savas en daoulagad, daerou a c'hlae'har, daerou a geun d'an devezioù a evursted hon deus tremenet gantan. Devezioù a dudi, devezioù a levenez, en pere hon deus bet eun tanva eus evursted ar zent hag an ele er Baradoz. Trugare d'ac'h, misionerien santel, evit ar boan ho peus kemeret ganimp evit hon henchan war-zu ar baradoz, hon gwir vro. Doue ha Sent Breiz da haen d'ac'h ar boan-ze, ha ni ive, d'hon zro, a bedo evidoc'h.

Abostoled ar fe, misionerien santel,
A brezeg ken nerzus lezen an Aviel,
'Vit ho komzou ken mat, trugare, trugare,
Doue da roio d'ech yec'hed ha hir vue!

Gant ho komzou gredus, hon c'halon entanet,
Ni a gerzo en hent ho peus d'imp digoret,
Evit gallout kerzet war roudou ar zent koz,
Ha kavet lod gante, eun de, er Baradoz.

L. CHARRAN.

AN TOLENNO

(De ouel ar Werc'hez en Avent, Itron-Varia-a-Avent, diou blac'h eus Mantallot a zo o vont d'ar bouk d'ober o c'homunion, e skeud an « Adorasion ». Eur gwisk mat a reo, evel eur vantel, a zo o c'holo ar bed ; eur bannac'hig avel c'hilas, lemm evel eur gontel, a droc'h e izili d'an den ; fresk eo davad. Al loar a zo eet da gousket. Paouezet eo ar c'higi da ganan ; an de a zo krog da darzan. Du-hont, en draouien, dour ar Yeodi o vont a benn-bouel dreist d'an dailho hag o kouei war ar bili en eur skrijal.)

P. — Te zo aze M. ? Deus hag ec'h efont asamblez hon diouig.
 M. — Arru on. Gortoz eur pennadig, aman n'hall ket an den mont a druilh-drask dre ar vouilhenn. Red eo d'an den dibab e hent.
 P. — O, me 'meus riu d'am daouarn.
 M. — C'houe en ez ivino da c'hortoz anon.
 P. — Ne oas ket bet er houk dec'h d'abarde ?
 M. — Nan !
 P. — Ma, te, kleo, a zo stagabl ?
 M. — Brao eo d'it laret. Pa n'am oa ket gallet mont ive ! Kaer e oa an treo ?
 P. — Kaer ! Sell biskoaz n'a teus gwelet ken kaer-all.

M. — Petra ? Toleno penos eo ar re a oe dis-
 kwelet ? Evel ar re vije gwechall gant an Tado
 int ?

P. — N'int ket tamm a bed heavenl. Ar re-man,
 sell, a zo kaer, kaer a-walc'h ive avad, ken ma
 van an den batet, digor e c'houe gantan o sellet
 d'o c'had. Darn a ve en du, darn a ve e liou, hag
 ar vijajo, sell, a ve kaer, n'on ket ewit laret d'it
 pegen kaer, pegen dous, pegen amgroaus. N'am
 eus ket gwelet an Otro Doue c'hoaz, mes n'hall
 ket bean kalz koanloc'h. Gwelet e veint oc'h
 arruout eno an eil war lerc'h ebon, war eun ninsel
 vras, stignet en-kreiz an Iliz. Me zouje ganin e
 oan arru, evel sant Pol, en driel estaj er baradoz.

M. — Lakat a rez anon da gravignat ma fenn.
 Dalc'h da laret d'in petra 'tevoa gwelet. Plijadur
 a ra d'in klevel anout.

P. — Bue ar Werc'hez a oe gwelet da gentan.
 Adam o tizenti en baradoz an douar, eur Werc'hez
 prometet da derri e benn d'ar serpant euzus, ha
 da lakat war an douar Salver ar bed. An drouk-
 ele o laret na blegoint ket d'En adori, strinket
 raktal da bunz an ifern kleuzet ewite. Bugale
 Adam war an douar o vont da heul an dizurz ha
 beuet evel keilhon gand an dour-bras, nemet Noe
 hag e vugale a welemp o vageal ebarz an Arc'h
 en-kreiz an dolen. Ganet eo ar Werc'hez Vari.
 Eman o vont, gant he zad Joachim hag he Mamm
 santez Annan, da vevan d'an Templ, ewit gallout
 pidi ha serviji ezetoc'h an Otro Doue. He dilhad
 gwen evel an erc'h a lar pegen santel eo hec'h
 ine. Kuzet eo he bleo melen gant eur ouel, hag
 eus he daoulagad glas dindan he mouchenno
 du fin, ne ve zourprenet sell kurus a-bed. Nemet
 komjo an Nenv diwar he muzello alaouret en-
 kreiz he dioujod ru-ruz. Digemeret eo gant
 ar beleg bras en traou ar pazenno-benerez, hadet
 bleunio warne, ha 15 ane evel pemzek Mister ar
 Rozera. Ar Werc'hez en Templ a dremen he bue
 o pidi, hag o vrodan. Distrei a ra da Nazaret,
 eun tamm ardk hec'h eured, hag eno e welomp
 an El ouz he zaludi. Dibabet a zo d'ei ar zantelan
 pried, ewit pellat pep tamallerez hag ewit kuz ar
 Mister eus an Drouk-spered...

Poent eo d'in hastan, tostât a reomp d'ar bourk.
 Gouel ar Chandelour a zeu goude ; Jezus en
 Templ ; sant Jozeb o vervel... Krog eo kroaz ar
 Werc'hez. Gwelet a reomp anei en he Fasion. Nag
 a levenez goude, pa gav he Mab Jezus savet eus
 ar be !

Poanius eo an disparti de ouel an Asansion ; ar
 peur-rest eus he bue a dremen, koulz eo laret, er
 Senakl, o pidi, elec'h ma oa de ouel ar Pantekost.
 Gwelet a reomp hon Mamm vat o vervel da
 c'honit d'he bugale gras ar maro mat, hag o sevel
 goude d'an nenv war dioueskel an Ele. Arru eo
 breman an tolenno a liou.

Ar re-man, evelkent, eo ar re gaeran. Toleno
 hent ar Groaz int. Sell biken, nan biken, hag e
 veofen da gant vla, evel na rin ket, da nao c'haut
 vla zoken, evel Mathusalem goz, biken n'afe diwar
 ma spered Jezus o vervel war ar Groaz, he Vamm
 en e gichen, hag ar Vadalen o walchi e droid
 gant he daero ! Nag Itron-Varia Drue kennebeut,
 he Mab war he barlen, o polat d'he benn gouliet.

Eun heur a oa e camp en iliz, ha me jouja ne
 oa nemet pemp munut.

Pan eo kanet an Anjeluz ha laret eun toullad
 pedenno, pep-hini a ya d'ar ger, sioul ha didrous,
 an eil'o kontan d'egile petra 'nevoa gwelet.

Banno hir al loar velen, o paran en oabl ste-
 redennet, hon levie, ha pep-hini a ye joas da
 glask e loj.

... Merc'hig kez, na daly man klevet. Red eo
 gwilet... Ewit me a zo manet blaz kaout c'hoaz
 war ma geno...

M. — Me yel ar wech kentan ive, jonjan, pe
 vo start ar foenn da dennan... hag e ve red d'in
 mont war ma daoulin...

P. — Sonjomp breman en hon c'homunion...
 Penc'h ! Arru omp er bouk, war wel eus an Iliz...
 Jezus a zo ouz hon gortoz, ha sant Vilin, hon
 Patron...

AR MIGNON.

AR GER VILLIGET

GANT
 LAOUIK

(KENDALC'H)

V

Leun eus ar zonzjo-ze Erwan a arruas en Ru ar
 Gar ; heavenl a-walc'h e oa ouz ar re e oa o paouez
 tremen ennê, nemed e oa eun tammig lousoc'h, rak
 an holl giri a ya da gar ar marc'hadourez a dre-
 mene dre eno ; evit ar gweturio hag ar veajourien
 e oa gret eur ru neve eun tammig pelloc'h.

Hep dale e kavas an n° 18. Goulen a reas di-
 gan ar borzierez, a oa o skubat toull he dor, hag-
 en eo eno oa an itron Marrek o chom.

— Ya, emei ; er bempved, an nor en tu deo.
 'N em lakat a reas da bignat ar viuz tenval ha
 sonn. Dre ma save e saute eur c'houez pouner,
 c'houez al louedet o vont en e benn, hag eun alan
 fall a groge en e c'houg.

— Tier ar sort-man, a zonzjas, a zo mad da gas
 tud yac'h ha krenv d'ar vered.

Digouezet e-krec'h, e skoas war eun nor. Digoret
 e oa d'ean raktal hag e welas dirakan eur plac'h
 yaouank na oa ket stum eur vicherourez warui.
 Chom a reas zouezet.

— Va digarezet dimezel, emean, e dok en e
 zorn, faziet em eus hep mar ; me a glaske an
 itron Marrek.

— Aman eman o chom, emei gant eur mous-
 c'hoaz dous, o welet e souze a-dre, deut er gampr,
 otro.

Mont a reas e-barz hag ober eur zell en-dro
 d'ean. Gwelet a reas eur plac'h drouklivet astennet
 en eur gwele fall, eun all o kempenn eur plac'h
 vihan lost d'ar fenestr ha daou bôtrig o c'hoari
 e-kreiz ar gampr. An holl a droas o fenn outan.

— Setu aman an itron Marrek, 'me an dimezel ;
 klanv e eur pennad 'zo.

— Erwan a dostaas d'ar gwele.

— Evrus bras ou da c'hallout ober hoc'h anaou-
 degez, emean d'Anna. Anaout a ran ho pried pell
 'zo, rak me zo mab d'an otro Karadek, perc'hen
 mereri e dad gwechall.

— Ho trugarekaat a ran kalz da vean deut d'am
 gwelet 'me Anna gant eur vouez zempl ; allaz !
 trubuilhet on 'vit ar beure, rak diou eur zo a tleche
 Fanch bean er ger ha nan e ket arru c'hoaz.

— Me zo deut da digas kelou anezan d'ac'h.

— Ma Doue, petra 'zo c'hoarveet gantan ?

— Nebeut a dra ; 'n em dapet an evoa dec'h
 war e labour hag ec'h e deut 'vit eun eiz de ben-
 nak d'an hospital.

— Mar na faziet ket ac'hanon ?

— Perak e fazife ac'hanout ! 'me Soaz a dostaas,
 an hini vihan ganti war he brec'h ; n'houle biken
 hen ober ; n'a teus ket ezom da vean nec'het, rak
 me anav an otro-man.

Na deuec'h ket eur miz-zo pe warden, emei
 d'Erwan, da welet eun smezeged d'in ec'h e bet he
 fried tri miz en hospital gant eur c'har dorret !

Ze halfe bezan, eme Erwan o ruian, med n'a
 ket a ze a fell d'imp komz breman ; gwelomp
 penaos eman ho kont, a laras d'Anna.

Hag a reas eur zell mad d'ei.

— Ma mignonez ker, emean pa oa pare, kentan
 tra 'zo d'ober eo ho teunan eus an ti-man. An aer
 vad hag ar peoc'h a bareo ac'hanoc'h hep dale,
 vad hag ar vefet war droad hag ho pried menez
 Med, dal ma vefet war droad hag ho pried menez
 tra, em be eun ali da rei d'ac'h : dizroet d'ho pro,
 rak homan na daly man evit an eil nag evit
 egile. Da c'hortoz me ya da glask lojeiz-all evi-
 doc'h.

Anna a laras gant eur vouez trist :
 « Alio mad a roet d'in, otro, med penaos o
 heuilh pe n'em eus gwenneg ebet ken ha ma fried
 en hospital !

— Bezet dinec'h, emean, ze a zell ac'hanon.

An dimezel, a oa chomet a-dre betek neuze, a
 dostaas.

Mar na displij ket ze d'ac'h, otro, emei, e c'halfe
 dont d'eun ti bihan an eus ma zad difeurm war
 bouez eul leo vihan diouz ker ; eno 'vo avad gan
 he bugale da c'hortoz ma vo pare he fried.

Erwan na zonzje ken euni hag a dizroas. Evel
 en toull an nor, ar menez mousc'hoaz dous, eur
 glas a oa skler ha seder evel oabl eun devez hanv,
 santout a reas e galon o tomman hag e sonjas.

— Homan, a zo unan eus ar bleun dudius ze a
 lak Doue war an douar, n'e ket evit plijadur
 daoulagad ar pinvik, mes evit seveni ti ar paour.
 O ! nag eo evrus nep an eus unan evlsee en e dit
 Tennet e oe eus e zonzjo gant Anna a responte :

— Me n'em eus man ha ne dalvean man
 ken ; n'hallan eta nemet ho trugarekat a greiz
 ma c'halon hag ober ar pez a laret d'in.

— Kemeret kalon, 'me Erwan, ha hep dale e
 vefet war droad ken krenv ha biskoaz ; kenavo ;
 me ya d'ober digas lonzeier d'ac'h ha varec'hoaz
 ec'h efet d'an ti an eus an dimezel ar vadelez da
 ginnig d'ac'h. Na vet ket nec'het gant man, me en
 em garg a bep tra ; emberr e welin ho pried hag a
 larin d'ean em eus ho kwelet hag ec'h et gwelloc'h.

— Laret d'ean ive e vin nec'het ken na vo
 dizro ha n'ankouan ket anean nag e vugale ken-
 nebeut.

— Pelec'h eman tata ? a c'houlenne an hini
 henan.

— Chomet eo da labourat 'me ar plac'h yaouank,
 a gemeras anean etre he divrec'h ; warc'hoaz mar-
 teze e tenio d'ar ger ; an otro a ya da welet anean ;
 petra 'laro d'ean eus da beurz ?

— Laret d'ean dont d'ar ger, 'me ar pôtrig.

— Me her graio, eme an den yaouank ; kenavo,
 dimezel, rak ret e d'in tec'hel.

— Kenavo otro.

— Evrus bras e vin, emean ouz toull an nor,
 mar me ar blijadur d'ho kwelet c'hoaz eur wech
 bennak.

— Ze 'vo 'vel ma plijo gant Done, emei, 'n eur
 zevel he daoulagad glas warnean.

Tec'hel a reas Erwan ; poent e oa d'ean hastan
 rak eur an oferen a dostae. Perak o tiskan ac'hane
 ne gave ken ar ru ken trist nag an treo ken
 hudur ? Perak, pa chome en e zonzj, e wele had an
 de daoulagad glas troet outan hag e kroge raktal
 e galon da lampad ? Ne c'hoantae ket gouzout, med
 karout a raje bean c'hoaz en ti Fanch ar Marrek.

(Da heuilh).

LAOUIK.

KELSIER EUS AR BED-OLL

Biniou-brezel nevez. — Seul wech ma vez graet
 eur gavaden nevez hag a c'halfe gwellaat buez an
 den war an douar, e weler ar stadou o kas ober o
 gonid anezi evit ar brezel. A vech ijinet an nje-
 rezed hag an aelistri, setu, stadou an Amerik o
 sevel eur yalc'had a veur a vilion da groui eur
 skouadren d'ober ar brezel en ear. Stadou an Eu-
 rop eus o zu, na chomont ket war lerc'h, ar
 Franz dreist-oll. Houman a zo ganti betek an
 gwella aelistri-brezel.

sperec eur vro, ha pegement a zroug en deus great ar galleg d'ar brezoneg en hon amzer. Bet ouñ e kostezion Konk-Laon, e bro Ar Gouidek, o kinnig eus an eil d'egile soniou brezonek.

Ne lavarin ket ped em deus gwerzet e pevar devez, rak mez em bije, ha mantl a rafec'h.

Ar merec'hed yaouank, ar baotred, a lavara d'in : « E brezoneg eman ?... Oh ! neuze, n'e ket bras ! Ma vije bet e galleg ! Ah ya !... »

Evit gwelet pegement a zistruch en deus great ar Galleg en hor bro, n'hon deus nemet goulen ouz ar ganerion vrezonek ha kerkoulz eo o micher hirio evel gwechall. Holl e lavarint d'eomp eman ar vicher o vout d'an traou', lac'het gant ar galleg, breman 'zo ugent vloaz daou tri ganer brezonek er mezez foar a tee deveziou mat ; hirio e vezo a-walc'h gant unan er foarion bras hag er pardonou, ha c'hoaz alies e vezo disten e c'honidegez, dreist-oll, ma ne ve ket gantan eur zou nevez bennak evit didui ar yaouankiz.

Ar pezh a zo bet penn kaoz d'ar galleg da c'hoñnit war ar brezoneg, de vihana, evit ar pezh a zell ouz ar zoniou hag ar gwerzou, eo, a dra-zur, ar muzik a heññ ar ganerion c'hallek. Ar muzik a chach an dud evel a c'houzomp, hag an eil o welet egile o kemer soniou galleg, an holl o deus kemeret, ha kendalc'her a reont da gemer. Red e vije eta d'ar ganerion vrezonek kemer eur muzik, hag er c'hiz-ze, ar galleg en devije beac'h, dreist-oll, ma vije gant hor c'hanerion soniou evit lakat ar yaouankiz da c'hoarzin eun tam. Soniou fentus a-walc'h a zo skrivet e brezoneg, ha c'hoaz e c'hellfe beza ssvet, evit ober mez d'ar zoniou galleg fentus a ampeozon kalonou ar yaouankiz en hon amzer, hag a ra disprijout o bro hag o yez. Eur vez eo klevet e ruiou hor c'hearion bihan, mouezioù bugale eus a Vreiz o kana a-bouez o fenn soniou n'o deus na rim na rezon, hag a zo ganto c'houez an hailhoned a Paris.

Eun tad hag eur van hag o deus eun tammig karantez, n'e ket hepken evit o bro hag o yez, mes c'hoaz evit o bugale, a dle miret ouz ar re-man da gana eur seurt luc'hach a ra mez d'an dud vras.

Lennit hoc'h-unan, c'houi, tud en oad, ar zoniou-ze a vez gwerzet er foarion, lennit anezo holl, hag e welot ar vrenadurez a ginniger hirio d'ho pugale evit daou weñneg. Lennit ar zoniou gallek-ze, ha silapit anezo en tai'h, ha kemerit en o lec'h soniou brezonek a ray vad d'ho kalon, dre ma kaozont d'ec'h er yez-man dinam ha c'houek a gomzas hon tadou-koz. Neuze ho pezo great vad d'ho pugale ha d'ho pro gaer Breiz-lzel.

Ar Stourmer.

Ya, pebez gounid ma vije gallet dizrei sperec ar yaouankiz diwar ar zoniou gallek. Daou si o deus, peurvuian, evidomp, kristenien ha Bretoned ; en galleg int skrivet ha treo fall a zo enne.

Piou eta na wel neuze penos ar pezh 'zo d'ober eo, dreist-oll, kemer ar vugale, dre ma 'z int yaouank, hag o dougen da vean tud a greden honest ha fur ha tud a garante-bro ?

Setujeno al laboura-ziabel hag an hini gwellan, evit skarzan diwarnomp ar zoniou gallek brein.

Eul labour-all, mat sur ive, e vije kaout kanerion ha sonerion gant soniou a bep sort, da ganan war ar meaz. An dra ze 'zo bet goulenet aman ive gant hon mignon Pen-Breton. Gret e vo mar be bolante Doue. Pep tra a arrou en e goulz.

N'e ket eun dra, na daou, na tri, hon deus da groui 'vit had'houean en kalon pobl Breiz ar vue vretou. Re verr eo sperec, re verr eo diouvec'h, re verr eo bue eun den da vriata kement a zo ezom d'ober, kent ma vo Breiz en gwirione Breiz.

Mes, c'hoaz eur wech, pep tra a digoueo d'e goulz, gant ma vo bepred hon sperec hag hon dorn en labour, renet gant fe vat hag onestiz.

D.-N.-D.

AR BLEIZ HAG AN OAN

An nep a ve an nerzusan
Dalc'hat 've c'hoaz ar gwir gantan ;
Me 'c'h a da diskoul hep dale,
En nebeut gerioù kement-se.

Eun oan yaouank, en eur braden,
Eve dour skler en ruzelen :

Eur bleiz war yun ha naon d'ean
A dosta didrous da heman :

— « Petra, eme al loen traitour,
Eo d'it dont da veskan ma dour ?
Bremazon te 'vo kaslet
Gouin eus an droug a teus gret.

— « Sir, a respont an oan neuze,
Mar plijfe gant ho majeste,
Douasaat kounnar ho komzou ;
Sellet 'c'h ou ugent a bajou.

D'an nebeutan, eus an andret
'Wit eva dour 'oc'h 'n em laket,
Ha n'hallan ket, eus al lec'h-man,
Hoc'h evaj tam ebet meskan. »

— « Ma evaj te a teus mesket !
'Me ar bleiz meurbed kounnaret :

Rentet a zo d'in ar c'heleou
Dimeus an drouk-prezegonou.

Gret ganit enep ma ligne,
N'eus ket pelloc'h 'wit warlene. »

— « Gevier, sur mat, c'houi 'peus klevet,
Rak d'ar c'houz-se oan ket ganet ;
Ma mam me 'zo c'hoaz o tenan,
'Me an oan paour en eur grenan. »

— « Ma, n'eo te, e oa da vreur bras. »
— « Meus breur ebet, na bet biskoaz ! »

— « Eus da gerent oant neuze,
Ha war ma stad int a gaoze ;
Ho mesacrien hag ho chas
A zo dre-holl ouz ma argas ;
Ha mar choman c'hoaz en bue,
'Mens ket d'ar re-ze trugare.
Klevet 'mens en de all, zoken
'Poa laket en gwerz ma c'hroc'hen.
Kement-se oll 'zo d'in laret ;
Poent bras eo paeon an torfed. »

Raktal neuze, ar bleiz er c'hoad,
A stlejas gantan an danvad,
Euo an oan 'zo bet taget,
Ha gant al loen hudur debret.

...

Gwelet e ve c'hoaz o redek,
En hon bro bleidi daoudroadek,
Ar re-ze a grog hep damant
Barz ar madou hag an arc'hant ;
Ne ver ket oll taget gante,
Mes gwasket vil ha didrouc.

Pep-hini eus ma rimadel,
A denno, mar kar, eur gentel.

...

Y.-M.-S. KOZ LABOURER.

Klennvejou-red. — Pensaos o dizarben

Eus a bep tu e klevet komz a wall-glenvejou, terzien domm pe red-kof ; en em astenn a reont dre ar vro, dreist-oll e Kerne hag e Bro-Welo, en-dro da Blougerneve, da Blouha ha da Bloubalanek. Evit dizarben ar c'hlenvejou-se hag o herzel d'ober o ran er vro, daou dra 'zo da zionall dioute dreist-oll : al *loustoni* hag ar *ceventi*. Dre d'c'hel pep tra net en tier hag en-dro d'ar glavou, rieu e virer ouz ar c'hlenved da gaout peg en eun tiegez ha d'en em led. Eun dra ivez hag a zo bet taolet ple d'ezan eo e vez skoet e-touez ar re gentan ar re a zo dinerzet gant an evach, hag eur wech skoet, diesoc'h eo d'ar re-se yac'haat eget d'ar re-all.

Fentigellou

En eur c'hombot trede klas eus tren Pariz eman Pipi Dibreder kas boutan eur valizen pouanner, pouanner e-barz ar roued a-us da benn eun itron goz. Houman a zo gwall-need'hat. Peadra 'zo da vean !

An itron goz o krenan. — Diwallit 'ta ho valizen en hano Doue, notrou kez, gant aon na gouezfe.

An Dibreder. — Ha pa gouezfe, itron, ne vern ket ! Ne ran forz ! N'eus ket a draou bresk e-barz.

...

Ar serjant, karget da verka deshadurez hag ampartiz ar zoudarded nevez war o levrig. — Ha te, Lemlaten, gouzout a rez heññ ?

Lemlaten. — O ya, serjant !
Ar serjant dishredik. — Ha pelec'h a teus desket 'ta ?

Lemlaten. — En dour !

...

Eur beajour, pres warnan, a c'houlen e ti-dibri gar Gwengamp, eun delien bara ha kig... buhan-luhan !

Ar beajour. — Petra ho peus roet d'in aze ?
Biskoaz n'em oa choket kig-chech par da heman c'hoaz !

Ar c'atez. — N'e ket souez, notrou. Gant kement a bies a zo warnoc'h, elec'h ho telien gig ho peus debret... ho pilhet.

E GWERZ

TIMBJOU BRETON

Timbjou breton eus ar braoan a bep liou, warne skrivet pep seurt gerioù a skouer vat evel : *Doue ra viro Breiz. Dalc'homp stard bepred 'vit Breiz*, hag all, a zo en gwerz en *Kroaz ar Vretoned*, 'vit mad *Breuziez ar Brezoneg*.

Pemp timb evit eur gwennege, hag eur gwennege 'vit ar frejou-kas.

War greiz an timbjou-man e ve peget an timb gall.

...

Setu o lont mare an de kentan 'r bla. Breton ebet na dremenno hep skrivan eul lizer bennak da gerent pe da vignoned.

Setu eta ar c'houz da brenan timbjou breton. Breton ebet, ar bla-man, na dleje kas eul lizer gant an de kentan 'r bla, hep lakat warnean eun timb breton a gousto d'ean eur gwennege pep pemp.

Gwerzet hon deus en berr amzer ar c'houec'h kant hon doa bet. Ec'h eomp breman da c'houlen daou vil. Gant se, lennerien ker, n'ho pet ket a doan da c'houlen

timbjou breton.

Laket eur gwennege ouспен evit o c'has d'ac'h.

TOLET PLE MAT !

ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personed n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar *Savoyarde*, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paeon eiz gwennege dre vil nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar voleien ezommek.

Ar *Savoyarde* a ra, ouспен, kement assurans a zo, assurans lan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherouien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri matez pe mevel, pe tud impliet dindanan a dle kas kelo da E. AR MOAL, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Ar *Savoyarde* a glask tud 'vit ober assuransou en arondisamant Gwengamp.

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : *Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux*.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvarion ha mein-besioù
En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN O

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

Kroaz ar Vretoned

PRIZ AR C'ROUMANANCHOU

16 real ar bloaz evit Breiz ha Bro-C'hall.
2 skoad evit ar broioù estren hag evit ar Broioù keltiek.

REENEROEN :

E. AR MOAL. (Kas da heman al labourioù).
AR YEODET-BOCHER.

EMMANNOU-KONVEZ HA
KOURMANANCHOU

An Aotrou, TORNELLES, 27, ball Chazour, a zigemer anezo

A. Brezonek hag ar feiz,
zo breur ha c'hoar en Breiz.
FURZEZ AN GRIZ.
Gant brezonek eo deud ar feiz.
Gant ar gallok ez aio a Vreiz.
FURZEZ AN GRIZ.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek
Yez ar dud vad ha kalonek.
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,
Ouspenn ar Vez. e va Pec'het!

MILIN.

KONTADEN NEDELEG

KOUEF NEDELEG

Kinniget d'an dimezel M. M.

Penôs ec'h eas Jani en kouef

An drede zùl eus an Avant, Jani, o sevel eus he gwele, d'ar beure, a lavaras evellen d'he mam :

— Mam, n'ouzoc'h ket pesort hunvre 'm eus gret fenez ?

— Tap ar zil hag ar bel, ha kerz da c'horho 'r zaoud; eberr az tevo amzer da gontan da hunvreou.

— O mam, ma hunvre n'e ket hira! Eun dra bennak a wir a zo 'barz, sur mat, ha c'houi a halffe laret d'in petra!

— Tapet ar zil hag ar...

— Dustu-dak, mam; mes lezet ac'hanon bepred pemp munut da gontan d'ac'h ma hunvre.

Ha setu ar vamm oc'h ober eur c'hruz d'he dioueskia 'n eur lakat eun tam plouz war an oaled da c'honnan an tãn diandan ar c'heunenn.

— O bugale!

Jani, koulskoude, he devoa pemzek vla achu, daoust ne oa ket et c'hoaz en kouef. An tog a douge bepred, mes gant kalz a zispiljadur, rak n'houlle ken bean lakat en renk ar vugale, ha nehentoc'h c'hoaz en renk an dimezelled, pa oa o chom war ar meaz. 'Vit bean 'n he blend, he devoa ezom eur c'houef; seul gwech ma wele kamaradedez eus he oad o vont d'ar zùl d'an oferen gant eur c'houef moust war o fenn, e huanade leiz he c'halon hag e teue daerou en he daoulagad.

Biken n'he dije sonjet, koulz oa bet, e oa ar c'houef eun dra ken c'hoantaüs, nag an tog eun dra ken kazus...

— Ma! mam, eme Jani, 'c'h et da laret d'in petra 'c'h e ma hunvre.

Sonjet d'ac'h e oan 'n em gavet en toull dor kraou Belleem, hag e welen eno eur bagad merc'hed o vont er c'hraou gant kalz a brez. Tra souezus, gante holl e oa kouefou, ha ne oa pôtr ebet en o mesk. De ar merc'hed, marfad, e oa heman, da vont da bedi ar Mabig Jezuz.

Keit ma oant ermeaz mesk-mesk, n'anaveen den ebet, mes pa oent et er c'hraou, e welis eno eur bern tud eus ma c'herent ha ma anaoudegez, ma diou vam-goz maro, mam-goz Kerichennou, ha mam-goz Koalfreo, tantin Gait, ha tantin Môn, tantin Anna ha kalz a re-all; n'halljen biken na kontan ane na laret d'ac'h o hanoioù. Gante holl, evel em eus laret d'ac'h, e oa kouefou, kouefou a bep seurt kiz, katiolennou hira ha kaer, gant ar re goz, ha kouefou 'vel hoc'h hira gant ar re yaouan-koc'h. Biskoaz n'am oa gwelet na ken gwenn na ken skanv. Eur sklerijen hag a deue eus korf ar Mabig Jezuz a lake ane da vean ken lufr 'vel an erc'h pa goue eus an ne, e kreiz an amzer skler, an devezion skorn; eur bannac'hig avel flour a c'houeze enne hag a lake ane da zigeri 'vel iskili ar balafenned en hanv, pa veint o sunan mel war ar hokedou. O mam! kaerat e oa ar c'houefou-ze, ha nag e seblante vurus ar merc'hed-man bodet endro d'ar Mabig Jezuz.

Me a glaske ive ma zu da vont er c'hraou war-lerc'h hira pe hira eus ar re a dremene 'n em c'hichen; mes kaer am oa, pan esaeu mont dreist d'an trejoun, eun nerz a stourme ouzin, 'vel pa vije het eun treust o sparlan an nor dirakon. Souezet ha trist bras en em gaven, hag e sonjis eun dro bennak gervel unan eus ma mammou koz pe eus ma moerebezed da zont da gerc'hat ac'hanon.

Mes kaer am oe gervel, 'm eus aon ne glevet ket ac'hanon, pe maruze kentoc'h, ma mouez a vouze 'n em gouz; den na re van ouzin.

An daero 'n em daoulagad, e sonjen : « Ha daoust st perak n'hallan ket mont ebarz, gant ar re-all ? »

Setu, a greiz ma oan ken nec'het, hag eur vouez o tisken eus krec'h hag o kanan :

Gloar da Zoue e lein an Nenvou!

Kerkeut, mouez ar merc'hed a oa er c'hraou a zavas da respont :

Ha peuc'h war an douar... O mam, n'ouzoc'h ket petra laret ?

— Ha peuc'h war an douar d'an dud a volante vat ?

— Nan, mam, n'e ket ze a laret ?

— Petra 'la neuze ?

Laret a reut :

— Ha peuc'h war an douar d'ar Bretonezed a doug houfou !

— Jezuz Doue, Jani, sod out? Te lar t're !

... E sta-se e kaent, mam!... O ma Doue, neuze e welis skler perak n'hallan ket mont er c'hraou.

Me, eur Vretonez, a oa eun tog ganin war ma fenn! Ha penôs ober? Ma oa red kât eur c'houef 'vit mont en kraou Belleem, 'vit kelo d'in-me da lemel ma zog, ne vijen ket tam 'bet sroc'h da vean digemeret.

N'eus forz, bepred hen lemmis. O! neuze, sonjet d'ac'h, mamm, setu unan yaouank, merc'h Yonau Gergo, hag a varvas neve 'so pa oa en oad ganin, bouneuz a deuas raktal eus eur c'horn eus ar c'hraou da lakat d'in war ma fenn eur c'houef gwenn dispar, kaeroc'h 'vit eur gurunen aour.

Ha raktal neuze e krogas 'n em dorn hag ec'h is ganti er c'hraou, ha dre ne oa netra ganin da rei d'ar Mabig Jezuz, e rois d'ean ma zog, p'eo gwir hen an evoa roet d'in eur c'houef.

Ar Mabig Jezuz a reas eur c'hoaraden ouzin, hag ar re a oa eno, ma c'herent hag ar re-all, a reas holl memes tra.

Ha breman, mam, petra laret-hu eus ma hunvre ?

Ar vam he devoa gret eur zoug :

— Kerz da c'horho da zaoud bopred; gwelet e vo divezetoc'h.

Ha setu da ze Nedeleg, Jani, en eur zével eus ar beure, a gavas war an dol, kichen he gwele, eur c'houef, henvel ouz eur fulen erc'h nevé goueet eus holzioù an nenv glan, pe c'hoaz, gant e lorikennou hira ha moan, ouz dioueskell eur elig gwenn.

Pelloc'h, war eur gador, e oa eun tartan kaer hag a lugerne pa dostae ar golo outan, ha pelloc'h c'hoaz, war eur gador-all, eun davanjerig saei marellet, flour ha skanv evel eur bluen.

Ha setu eno, tud vat, penôs, da ze Nedeleg ar bla 1908, Jani Ar Marrec, evurus bras, a lemmas he zog hag a yeas en kouef. DIR-NA-DOR.

DALC'NET 'TA, CHAS KLANV!

N'ho peus biskoaz, lennerien ger, hegaset eur c'hi o tibri bouet? N'eo biskoaz digouezet ganac'h chacha war lost eur c'hi drouk?

Eo marvad, Ha meur a wech ive ho peus gouzauvet en ho tiouc'har gwaskaden dipitus eur c'hi lambrek pe unan drouk.

Hep mar, ive, eo het digouezet ganac'h gwelet warlec'h eur chase moc'h-goue ar heilh hag ar bec'h a ve etre ar chas pa ve lodennet etreze stripou tom al loen taget. Neuze ne weler nemed eur vanden loened kounnaret, a zebiant marnaonet, ne glever nemed youc'hadennou goue ha trouz sec'h ar restell-dent o koueza an eil war eben evel teurkizi...

Megred, ar youc'hadennou a oe bet, tremen eiz de aboue dimeurz, ebarz kambr an Deputeed, a oa henvel-beo ouz kounnar eur vanden-chas marnaonet; ha, marvad, an aotrou Archimbaud na oa ket maoc'h lorc'hus o sevel e vouez eneb d'e genvreder evit ne vijemp-ni, gwechall pa oamp bihan, o hegasi eur c'hi o voueta pe o chacha war lost aman drouk...

Petra 'ta a reas neuze an aotrou Archimbaud e-barz ar Gambr?

O ma Doue, nebent a dra Evel an darnvuia eus an dud a galon Archimbaud a laras e oa eur vez-ru d'an deputeed touch *pemp-mil skoad* ar bla, hep bezan goulennet araok kuzul ar vro abez. Pegwir ar vro abez a oa eneb d'ar pemp-mil skoad ha pegwir enpad ar votadesier ne oa ket goulennet ali ar bobl, ar pemp-mil skoad, eme Archimbaud, a zo arc'hant kemeret hep lealded, da laret eo, arc'hant *laeret!*

Archimbaud eta a alie an holl deputeed da zilezel gant ar Vro an *daou-vil skoad* kresk o doa kemeret ken buhan warlene ha d'en em walc'ha evel gwechall — gant 9.000 lur.

Paourkez Archimbaud. Mar n'en doa biskoaz klevet e bater... war an tu gin, tremen eiz de aboue dimeurz da vihanan e oa diskret d'ezan e litanioù...

Youc'hadeg, blejadeg, skrinjadeg, a vouzaras d'ezan e zioueskouarn. Holl en o zav, o daoulagad dislontret, o daouarn savet, o fennou ru gant ar gounnar, o bleo fuilhet, ar vlokarded a debras, a bouilhas, a labeas hag a lakas Archimbaud falloc'h 'vit fall!

Ah! laret a-walc'h e ve eo re baest an deputeed, eo eur vez d'e kemer 5 mil skoad p'eman eur rum-tud o vervel gant an naon pe friket gant an trachou (contributions)... Mes, kredet ac'hanon, mar n'eo ket brao lemmel askorn digant ar chas, diesoc'h eo c'hoaz difram pemp mil skoad diouz krabanou hon deputeed!

Ar bôtred vrago-man pa deuont war ar vro d'ober d'imp prezegennoù kaer, a ve flour o c'homzou, karantezus o zellou, tener o c'halon hag o dorn bepred astennet evit starda daouarn al labourer, ar micherour... Ya, pa ve ezom mouezioù!

Mes en diavez ar votadegou, goulennit digante an disieran gwenneg, an disteran zikour, lavarit d'e digeri o yalc'h evit lodenni gant ar bobl o femp mil skoad... digoueza mad a refet!

Hon labourerien a wel bep bla o c'houtribusionou o kreski; hon micherourien o deus mil

AR GER VILLIGET

GANT
LAOUÏK

(KENDALC'H)

VI

An de warlerc'h abred daou zen a deus gant eur c'harr da ger'hat holl dreo Anna. Ne badchont ket pell da gargan, ken neubeut a oa ané! Pa oant o vont da dech'el, Erwan a arruas ive gant eur wetur c'holoet hag e reas d'Anna ha d'he bugale mont gantan e-barz.

— « Gwelet em eus Fanch 'vit ar beure, a laras d'ei ha mont mat a ra ; laret an eus d'in e poke d'ac'h oll hag ec'h espere dizrei davedoc'h hep dale. »

— « Trugare evit ar c'helo mat-se, 'me Anna ; bet on nec'het hed an noz med fianz am eus ennozh ; gwelet a ran an eus Kemeret Doue true ouzimp ha trugarekaat a ran Anean da vean digaset ac'hanoc'h war hon hent. »

Hep dale e oant ermaez a ger ; heuilh a rent eun hent e-kreiz eur blenen dizolo, hep na bod na skod ; betek lec'h ma tize an daoulagad ne weled nemet chiminalo ijinerized a lec'h da lec'h o ti-vogedi hag, er pellder, eun torkad gwe bennak. An erc'h, na oa fontet med a lec'hioù, a re tarchadenno gwen war an douar noaz. Den war dro ; trouz ebet ; evel dilezet e oa ar parko-ze. Hag Erwan a zonje en e vro e lec'h ma oa an dud o lakat an ed er mare-ze ha ma klevet a bep tu strak ar skourje ha hopadeg al labourerien, evrus o kinnig d'an douar an hadn a ray o finvidigez ar bla warlerc'h.

Melkoniet, e laras d'Anna :

— « En hon bro ar mezio o deus o gened kenkoulz er goanv hag en hanv ; aman ec'h int hudur, na gavet ket, Anna ? »

— « Eo, ma Doue! emei. Ranna a ra ma c'halon pa zellan en dio d'in ; pegement e kaeroc'h hon farko gant o gwe avalo hag ar gwe derv a ra an dro d'ei evit ar re-man. »

Trei a rejont en eun hent-all hag eur pennad goude en em gavchont dirak toull-dor eun ijineriz vras. Ar wetur a baozas.

— « Petra 'zo? eme Erwan, o lakat e benn ermaez. »

— « Gwelet a reas eur wetur dre dan etal an nor hag an dimezell a roe an ti d'Anna a disken-nas anezi. »

— Demad, otro, emei d'Erwan a oa diskennet ive hag a zalude 'nei ; e oan o c'hortoz ac'hanoc'h.

Hag ec'h astennas he dorn d'ean. Mont a reas d'ar wetur o welet ec'h e Anna da zisken hag e reas d'ei chom e-barz.

— « Na diskennet ket, me ho ped, emei ; an amzer a zo re yen. N'hallan ket mont ganac'h 'vit ar beure med kaout a refet an ti prest d'ho tigemmer ha, warc'hoaz d'abarde ec'h in da welet hag en e vefet erfad e-barz. »

— « Ma Doue, eme Anna, penaos e c'hallin-me biken ho paeen eus hoc'h oll vadelezo ? »

— « En eur bedi evidon hag evit ma zad, eme ar plac'h yaouank goustad. »

— « Hen ober a rin bemde, a laras ar wreg paour ha ma bugale ive. »

— « D'am zro e vo d'ho trugarekat neuze ; penaos eman kont he fried, emei, 'n eur dizrei warzu Erwan a oa tostaet. »

— « Mar dalc'h da wellaet evel an deio kentanman e vo pare hep dale nemeur, emean ; eun nozvez vad an eus tremenet ha krenv en em gave 'vit ar beure. »

— « Gwell a ze, emei ; hastet fonnus en em barean, a laras d'Anna ha, 'benn pemzek de, kement a zo tremenet a vo evel eun hunvre fall evidoc'h. Kenavo warc'hoaz. »

— « Kenavo, dimezel, ha mil gwech trugare, eme Anna. »

— « Kenavo, eme an daou bôtrig, an evoa gret anaoudegez ganti hag e heje o daouarn. »

— « Kenavo, dimezel, eme Erwan a yeas ganti betek he gwelet, diaes e ve d'in laret d'ac'h ma holl anaoudegez evit ar vadelez a ziskouezet d'am c'henvroiz. »

— « C'houi 'ra vad d'am re ive, emei 'n eur vousehoarzin ha n'em eus ket ho trugarekaet c'hoaz ; hen ober a ran breman hag evelse e vefomp kitez. Kenavo ! »

Hag e tec'has. Erwan a chomas en e zav o sellet ar wetur o pellaat ha neuze ec'h aes en e hini.

Drouk en nevoa outan e-unan. « Perak en em zante ken sod dirak an dimezel-ze? Eur plac'h yaouank n'anavee ket ec'h e d'ober d'ean koll e benn breman! Trist a-walc'h e oa ze d'an oad ma oa ar ru ; na gomzhe ken outi, na klask he gwelet ken nebeut ken na vije et kwit an holl zonjo diod a zante o sevel en e benn hag a re d'e galon lampat pa 'n em gave diraki ; rak gwelet an evoa anei c'hoaz eur wech bennak en iliz ha bep gwech he daoulagad glas o devoa laket sonjo a evrusted, a garante en e galon. « Mar dimezan eur wech bennak, a sonje, e d'eur Vretonez, unan eus va gouen e tlean hen ober, ne fell ket d'in eta lezel ma spered da heuilh e fantazi. »

Distaget e oe diouz e zonjo gant Anna a c'houlenne digantan :

— « Anaout a ret an dimezel aze ? »

Ar goulenn-ze a reas plijadur d'ean, rak pistiget e oa gant ar c'hoant d'anaout doare ar plac'h yaouank hep n'anzave outan e-unan. Laret a reas eta.

— « Gwelet em eus anei eur wech bennak c'hoaz med setu aze an holl anaoudegez am eus bet ganti. »

— « Klevet ec'h eus komz eus an otro Solier ? »

— « Ya, emean, meur a wech ; per'chen eun ijineriz vras, neket 'ta ? »

— « Eo, emei, ha homan eo e verc'h ; he hano eo Mari Solier. »

O klevet ze Erwan a chomas souezet : ar plac'h yaouank ze eta 'oa an dimezel Solier a lared he devoa gret d'he zad helpen al labour 'n e ijineriz ha gwellaat stad e vicherourien en eur c'hiz ma n'halle ken ar socialisted kaout krog ebet warné! Eun dra bennak a oa enni hag a diskouee ervat na oa ket henvel ouz an holl verc'hed-all. Laouen e oa o vean klevet he doare.

— « Kement-man a droc'h krenn da bep tra, a zonje ; ar plac'h yaouank ze a zo pinvidik-mor ha me nan on med eur paour en he c'henver ; nan omp ket gret eta an eil evit egile. »

Santout a reas e spered skanvec'h hag e galon dizam goude-ze hag en em lakas da c'hoari gant an daou bôtrig.

Ar wetur en em lakas da disken hag, eur pennadig goude en em gavchont war ribl ar Sèn a ruilhe eno he dour ponner goude bean kwitaet Paris. War hed pevar c'hant metr diouti e-touez ar gwe kreneriz ha peupli a oa regennet tier bihan, eul liorz dirak pep-hini ané.

— « An tier-ze, eme Anna an eus savet an otro Solier evit e vicherourien war ali e verc'h ; n'emaint ket pell diouz o labour hag aer vad o deus. »

Erwan a zelle hag a zonje :

— « Mar lakfe ar socialisted an holl arc'hant a dispignont d'ober d'ar vicherourien sevel enep o fatronez da gempenn evite tier evelse e rafent gwelloc'h labour. »

Ar wetur a baozas dirak unan eus an tier-ze. Eur plac'h oajet a oa war doull an nor d'o digemer.

— « De mad, otro, emei ; an dimezell he deus laret d'in dond da rei eun tan zikour da lakaat urz en pep tra dre mac'h e klanv an itron aze. »

— « Eur zonj mat he deus bet, eme Erwan, rak ma c'henvroadez n'e ket krenv. Fianz am eus e refet eus ar gwellan evit na vo ket waz eus an devez-man. »

— « Ya, ya, otro emei, bezet zur a ze. »

Kar an dilojerien a arruas ive. O welet ze Erwan a roas e c'hourc'hemenno d'Anna ha neuze e tec'has goude bean paeet an dilojerien ha poket d'an daou bôtrig a oa lampet tre e zioushar da gimidi dioutan. Poent e oa d'ean dizrei d'an hospital a-benn ma teuche ar medesin d'ober e dro.

(Da heuilh).

Muioc'h a honor

d'an dud pinvidik er baradoz

kouls ha war an douar

Bebet o doa o daou e kreiz ar vrasa dienez, en enkreiz, er renk izella e-touez an dud hag e oant deuet brema da veza koz an eil hag egile.

Pa astennas ar gwaz e gorf evit ar wech diveza war an doumad plouz a dalveze d'ezan da wele, ar vaouez a welas a-walc'h edo o vont da goll an hini a yoa bet he skoazel. Kregi a reas enni eun anken vras, hag o veza ne gave mui an nerz-kalon a vije bet red d'ei kaout evit kenderc'hel da vale he-unan war hent ar vuez, setu hi oc'h asten ive he faour kez korf e-kichen hini he gwaz.

Mervel a rejont unanet er maro, evel ma 'z oant bet unanet er vuez ; o daou e tibunjont d'an hevelep pred war dreuzou ar bed-all ; o daou ez ejont harpet'an eil war egile dirak barnedigez an Aotrou Doue ; hag o daou ive e oent salvet. Hor Zalver a roas d'ezo eur paper evit mont da gaout sant Per da lavaret d'ezan digeri d'ezo dor ar baradoz. Ne dalve ket d'in chom pelloc'h da lavaret d'ec'h pegement ez oant eurus.

Hogen, en em gaout a reent c'hoaz gwall-zinerz gant an diouer eus a galz traou a yoa bet red d'ezo gouzanv er bed-ma ; skuiz e oant ive gant an hent o doa ranket ober eus an douar-ma d'ar bed-all hag, a hent-all, chom a-re a c'hoaz eun dra bennak war o spered eus ar spont o doa bet epad ar varedigez. Hag abalamour da gement-se holl e kavent ebet kemeret o amzer evit mont eus lezvarn Doue d'ar baradoz ; brao-tre e kavent ar vali binvidik o doa da hent evit mont d'an enrusded. Ha perak n'o divije ket kemeret o amzer, p'eo gwit e oant sur eus o baradoz.

Mont a reant eta laouen-bras, o zal diroufen, ar mousc'hoarz war o muzellou, hag ec'h event o gwalc'h eus ear yac'h ar baradoz. O zeadou zoken a yoa distagellet-mat ; selaout anezo :

— « Ac'hanta, gwreg, a lavare ar gwaz, petra lavaren med d'it dalc'hmat? Ha petra leverez eus an digemer en deus great an Aotrou Doue d'eomp? »

— « A! va gwaz paour, emei, ya, ar wirionez a yoa ganez ; digemeret brao omp bet gant an Aotrou Doue. Ha piou en divije kredet morse e vije bet digemeret gant kement a honor tud eus hor seurt, daoust d'an truilhou a yoa war hor c'hein ha d'ar boutou-ler diseul a yoa ouz hon treid? . . . Piou en divije lavaret e rajed en nevou eur seurt digemer da dud hag a yoa war an douar reuzidikoc'h eget chas, a veze sellet outo gant dispriz, pa zelled outo zoken, rak d'ar peurliesa e tec'hed diouzimp evel ma tec'her diouz ar vosen. »

— « Sell, maouez, ama en nevou, evel em eus lavaret d'it kant gwech, ama n'ez a ket an traou evel du-ze, war an douar. Ha koulskoude, santez Anna! red mat eo d'in anzav, n'edon ket tre em eaz bremaik, abalamour ma c'helled gwelet dre doullou va bragou n'oa, ziousaz! roched ebet war va c'hoc'h-hen. Te da-unan, gwreg paour, ya, te da-unan, sellet em eus ouzit, te a yoa diaes ; lakaat a reas da hoan evit beza dereat dirak ar zent hag ar zantezed a reas an dro d'Hor Zalver. A drugare Doue, den ebet, a gement ma ouijenn, n'eo bet re zouezet o welet da zivesker noaz. »

— « Tra! tra! eme ar wreg, en eneb eo ; n'ec'h eus ket gwelet penaos ez on bet saludet gant sant Josef? »

— « Ha te, maouez, n'ec'h eus ket gwelet ar mousc'hoarz he deus great d'in ar Werc'hez? »

— « Hag an elez o sellet ouzimp evel pa vijemp bet tud a ouen vras? »

— « Hag an Aotrou Doue 'ta, en deus lavaret d'eomp : « Ra viot deuet mat em lez, va bugaligou! »

— « A! va gwaz ker, eme ar wreg, ma welje ar re binvidik penaos e reer d'eomp brema, mar-teze e savje mez ganto da veza bet ker faeus en hor c'henver. Na me a garfe gwelet o ardou . . . »

— « Ya, ober a rafent beg moan, me gred, rak ne dalv ket d'ezo gedal bezza digemeret ama evel ma 'z omp-ni bet. »

— « O feiz, nan avat! eme ar wreg. . . Ya, marvat sur! . . . Pep-hini d'e dro ; leal eo, me-chans! »

— « Ha koulskoude, maouez, lavar ama d'in, »

LAOUÏK.

pet gwech ec'h eus-te gros-molet o welet eazaman-chou ar binvidien, pa oa red d'eomp-ni dioneret eur bern traon ? Hag e lavares neuze : « Tiez brao o deus, ha dilhad kaer ive, mitizien, mevelien, kement ha ma karont : netra na vank d'ezo. Ha perak n'hon deus-ni ket hor lodig ive eus an traon-ze ? Petra hon deus-ni great da Zoue ? »
— « Sonj mat ac'h eus, n'eo ket 'ta, va gwreg ? »
— « Ha perak, va den, digas an traou-ze war c'horre ? »

— « Evit digas sonj d'it eus ar pez a lavaren neuze, eo an Aotrou Doue eun tad mat, e ro kement ha kement da bep-hini abret pe zivezat, hag ar re n'o deus ket bet o eürused war an dour o devo anezi er baradoz mar n'o deus great netra evit he c'holl. Ne felle ket d'it selaou ac'hanon neuze, va gwreg, pa lavaren d'it eo Doue al leald dreist. »

— « Gwelloc'h e ve d'it roi peoc'h, va gwaz, n'eo ket klevet a rafe an Aotrou Doue ac'hanout. »

— « Arabat eo d'it kaout aon, va gwreg ; Doue a zo re vadelezus evit kastiza ac'hanomp brema abalamour d'an dra-ze. Kastizet out bat war an douar, dre ma 'z eo bet red d'it gouzav maoc'h, evel ar re na fell ket d'ezo plaga da Zoue. Ya, kouls eo d'it hen anzav, n'oas ket a galon vat er stad m'oas lakeat gant Doue. Gros-molat a res a-wechou, hag alies eneb pep skiant vat. N'eo ket gwir an dra-ze ? Pet gwech n'ec'h eus-te ket great d'in bep seurt rebechou displeat ha diskiant ? Lavaret a raes evel-hen : « Mar ez piye an dra-ma hag an dra-hout ne vijemp ket ker reuzendik ! » Kaer am boa lavaret d'it n'hellen netra, hag edomp evel-se dre ma felle da Zoue hag evit hor brasa mad da zont, te a rea gwap, hag a heje da skoaz : « Evit hor brasa mat da zont ? » emezout. Ya, va gwreg, heja raes da skoaz gant fae... ne greñdi ket dislavaret ac'hanon evelato ? »

— « Lavar d'in 'ta, va aotrou, petra eo d'it c'hoari an heg ganen hizio en doare-ze ? »

— « C'hoari an heg, tamm ebet, va gwreg. Ma lavaran an traon-ze eo evit diskouez d'it edo ar wirionez ganen gwechall pa lavaren d'it e vichemp pinvidik bras eun dervex abalamour ma 'z oamp paour war an douar. Pa veze great ken nebeut a stad ouzomp gant ar re binvidik, me lavare d'it e vichemp digemeret evel prinsed e baradoz an Aotrou Doue, ha gwelloc'h zoken, p'eo gwir e tie ar beorien beza da genta er baradoz. »

Great o devoa eur pennad brao a hent evel-se, hag ez oant digouezet kouls lavaret, e penn o beach ; gwelet a reant, du-ze, e penn ar vali, an nor vras alsaouret a yoa o vont da zigori evita.

Setu eun eal o nijal evel eul lapous 'us d'o fenn. Heulia a rae hent an daou goz, da lavaret eo e teus eus lezvarn an Aotrou Doue hag ez ea war-eün d'ar baradoz, en e zourn eur paper bras evel eur gazeten, eur siel ledan warnezant.

Ne oe ket pell o vont betek an nor aour. Ha kerkent e oe klevet evel eur pez taol morzol o koueza war an nor. Prez bras a yoa war an eal, evit doare.

O klevet kement a drouz, sant Per a degas buan da welet petra yoa a nevez. An eal a lavaras eur ger bennak hepken, ha sant Per kerkent o vont da zigori an nor dioc'h an daou du ; goude e krogas e korden ar c'hloc'h bras a yoa eno e-kichen, ha da jacha warnan, evel p'en divije bet c'hoant roi da glevet eur c'helou eus ar c'haera da dud eürus ar baradoz.

O klevet ar c'hloc'h bras e bole e teus eur hapad bras a zent hag a zantezed da donll an nor. Dioc'h pell n'oa ket eas klevet ar pez a lavaret ; hogen, dioc'h o doare, dioc'h gwelet anezo e oa anat edout oc'h ober goulennoù ouz sant Per hag ouz an eal, hag ar pez a gleyent a rea d'ezo beza meurbet souezet ha laouen war eun dro. Dizrei a rejont war o c'hiz goude beza kemeret kuzul an eil digant egile ; hogen, dizale e tejont adarre, o tongen, lod garlantez ha kurunennoù bokedou fresk outo, ha lod-all bannielou eus ar re gaera. Re-all a zave eun nor nevez gant skourrou glas ha bokedou aour hag arc'hant, evit ober honor d'an nep a dremenje dre zindanni.

Eun dra anat e oa d'an daou bried ez eat d'ober eun digemer eus ar grana da uuan pe... da veur a hini.

Hogen, an den, pe... an dud-se, piou e oant ?... Soujal a-walc'h a reant, ha koulskoude hini ebet

anezo na grede lavaret d'egile ar pez a yoa war e spered. Hag e sellent a gorn an eil ouz egile, hag e save c'hwez enno... Mousc'hoarzin a rankent o welet kement-all. Hag, e gwirionez, daoust ha na zougent ket en o c'hierc'hien holl arweziou ar baourantez, a gas da blason kenta ar haradoz ?
Great ganto o labour, ar zent ha zantezed a yeas war dion reukennad, hag a degas daou ha daou er-meaz eus ar baradoz. Sant Per a yoa da genta, hag ar re-all a deus war e lerc'h, bannielou, skourrou palmes, garlantez ha kurunennoù ganto ; hag ez eant goustadik 'trezek an daou bried.

— « Lavaret a ran d'it, va gwreg, eme an den koz, n'onjou petra da zonzal eus kement-ma ; lavaret a rafe e tenont da ambroug ac'hanomp. »

— « Ya, va den, lavaret a rafe sur. N'em eus mui donetans ebet zoken. Sell ta, eme an eal o tiskouez ac'hanomp gant e viz, hag, ar zent a zeblant kaout kalz a levenez ouz hor gwelet... Gra 'ta d'ezo ar zalud gant da zourn, p'eo gwir n'ec'h eus tok ebet... Gra c'hoaz ! c'hoaz ! buan-noc'h ! buan-noc'h ! hag izelloc'h !... Dal ! setu m'eo bet darbet d'in koueza, kement e stouen !... A ! ma welle ac'hanomp ar re binvidik a zo aze, en traon, nak a zispiljadur o defet !... N'eus fors, karet em bija beza gwisket kempennoc'h evit mont dirak ar zent ha santezed-ze gwisket a aour hag a berlez... »

— « An dra-ze avat, va gwreg, a zo eun dra sklear, a lavaras an ozac'h, ne vezo ket sellent nemeur ouzit pa vezi gwelet a-dost. »

— « Hag ar zantezed na vezint ket douget da zellet ouzit-le, va ozac'h, » a lavaras kerkent ar wreg kroget ar c'hellen enni.

— « Mat eo ! mat eo ! va gwreg, eme ar gwaz. Laka da goel eünoc'h atao, ha kuz dindannan ar c'huchennadoù bieu gwenn a zo a distribilh oc'h da ividigon. »

— « Ha te, va faotr, eme ar wreg, laka da zaoz zourn da guzat an daou brenestr a zo digor war bennou da zoulouin. »

— « Ma a gred d'in, komerez, n'eo ket dereat da zour bried a zoare, evel ma 'z omp, beza dalc'hmato oc'h en em beilha evel-se. An dra-ze n'oa ket kalz a dra war an douar ; ama avat, en nen-vou, ne vije ket brao klevet trouz. Setu ar brose-sion war hed tregont kammed. Ema sant Per o vousec'hoarzin ouzomp gant madelez. N'hon deus ket a zilhad kaer, gwir eo ; bezomp laouen evelato, evel da zeiz sul ; an honor a reer d'eomp a dalo kement-se. »

Sant Per a zigoueze betek euno.

— « Dejz mat, va mignoned ! eme ar zant Edoc'h o tont du-ma, her gwelet a ran. Mat, mat sur, Bretoned ! Plijadur am bez atao o tigemered tud ho pro. N'eus ket bet lavaret d'in e tliec'h dont, n'eus fors a ze, bez' ez eus meur a gador vak du-ze, re gaer zoken, me lavar d'ec'h. Gwa-sa to n'em eus ket kalz a amzer da jom da varvailhat ganeoc'h. Lavaret ez eus d'in e teu eun den pinvidik bras, hag e ranken mont buan d'hen diambroug, pe e vezo dronk-koutant an Aotrou Doue. Mar hoc'h eus c'hoant da zont ive n'hoc'h eus nemet en em lakaat stouez ar zent hag ar zantezed, hag evel-se ho pezo ive roet eun tammig honor d'an hini ez eomp da zigemeret. »

Ha sant Per da vont adarre gant e hent, an daou baour koz a gemeras al lost hag a yeas ive da heul, ne gredent ket avat trei o fenn da zellet en dro d'ezo, kement ez oant mezek.

— « Ac'hanta, Fanch, a lavaras ar wreg gant piou ac'hanomp ema ar wirionez ? N'eo ket ganer-te, da vihana ; ha n'eo ket d'ar re binvidik eo e vez great ar muia trein en nenv kouls ha war an douar ? »

— « Marc'harid ; kez, anzav a ranken ez on berwelet, va zammig skiant vat, a gredan, a zo eat war an tu ginn... Ha koulskoude, n'eus ket da lavaret, komzou an Aviel a die beza ar wirionez ganto... »

— « Petra eo a zo oc'h ober dieas d'ec'h 'ta, va zud vat ? » a lavaras eur zant koz a deus warlerc'h ar re-all, beach d'ezan o vale.

Ar vaonez eo a gomzas evit he gwaz :

— « N'hell ket dont abenn da c'houzout, emezi, na me ken nebeut, kaer am eus brouda va zammig spered, perak e laka sant Per kement a gemm etre an digemer a ra d'ar paour ha d'ar pinvidik. Ar

binvidien o deus bet, evel a leverer, o baradoz war an douar ; hon Aotrou person koz koulskoude a hanve ar beorien izili goullet hor Zalver Jezuz-Krist. Seblantout a ra d'in e tiefe beza great kaeroc'h da izili hor Zalver Jezuz-Krist ma vije eur c'hem bennak da ober etre eur rummad hag egile. »

— « Eun dra bennak a wir a zo er pez a livirit d'in aze, daoust ma welan sklear ez oc'h bet flemmet gant eur goz kelienen. M'ho ped da deural evez mat ouz ar pez ez an da lavaret d'ec'h brema. Ar re baour evelloc'h, hag a zo, evel ma livirit ker mat, izili goullet hor Zalver Jezuz-Krist, ar re baour a ya hag a deu dre zor ar baradoz evel tud hag a zo en o zra, kement ha ker brao ma 'z eo bet red da zant Per ehaa da ober gont da bep-hini anezo, anez n'en divije mui amzer zoken da halana. Dont a reont, dre wir, a vagadou, da bep heur, ha roet e vez d'ezo zoken al leac'hioa gwella. Hoc'h uuan e welot anezo dizale. Evit ar re binvidik avat eo eur c'hoari-all. Petra en deus lavaret Jezuz-Krist diwar o fenn ? Eo ken dieas d'ezo lakaat o zreid er baradoz ha ma 'z eo d'eur c'hanval tremen dre graouen eun nadoz. Sonj hoc'h eus eus an dra-ze, moarvat, moareb ? »

— « O ya, Aotrou Sant, » emezi.

— « Mat, abenn ma 'z ay eur pinvidik dre zor ar baradoz, tra ken dieas d'ezan evel ma 'z eo d'eur c'hanval tremen dre graouen an nadoz, eo red, ya, eo red d'ezan, klevit mat, poania da zont da veza moan ; anzavit an dra-ze. N'eo ket eun dra gwall-eus, pa vezer kustum da gaout pep tra dioc'h e c'hoant. Eur c'hof re deo, eur yalc'h re leun, setu peadra da ziarben eur hent. Petra ranko 'ta da ober evit ne c'hoarvezo ket kement-se digantan ? Roi kement en deus a re d'an dud n'o deus ket a-walc'h ; en eur ger, ehaa da veza pinvidik, me lavar evitan e-uan hepken. Setu ar pez en deus great an den mat ez eomp da ambroug ; hennez evit beza saro'c'h da zont ama a zo en em zisec'hreat eus a bep tra, edo en noaz evel eur pruny ; hag abalamour ne vez ket gwelet alies eur seurt tra ez eomp da ober goel d'ezan.

Nan, ne vez ket gwelet alies kement-all ; setu kant vloaz a zo abaoe m'emaon er baradoz, hag ema eo ar c'henta pinvidik a welan o tont ebarz. »

— « Ac'hanta, gwreg, a lavaras an ozac'h, piou ac'hanomp eo a lavare mat ? »

— « O feiz, va gwaz kez, ema ar zant o paouez lavaret edo ive ar wirionez eun tammig bennak eus va zu... »

PLUENZIR.

KELER EUS AR RED-OLL

An nijerien. — Ar roue anezo, Wilbur Wright, en deus nijet epad div eur dioustu ha graet tostik-tost da bemp leo warn-urgent.

An aerlestr Clément-Bayard a dremen, gwech ha gwech all, en eur c'hournijal, a-us da Bariz.

En Alamagn e stager da zavel aeriistri brezel a gousto en tu-hont d'eur milion pep-hini anezo.

Maro eur C'hardinal. — An aotrou n'arc'heskob Lecot, arc'heskob Bourdel ha kardinal, a zo bet tizet gant eur maro trum e Chambery p'edo o tistrei diouz Rom. Oajet e oa a zeitek vloaz ha tri-urgent. Aluzener ar zondarded « mobilé » e oa bet epad ar brezel ha eskob e Dijon. N'eus mui nemet tri c'hardinal e Bro-C'hall : e Lyon, Reims ha Marseilh. An dean zant holi e oa an aotrou kardinal Lecot ha, gant-se, e oa sellet eun tamm evel o rener. Eur gwall-goll eo e varo evit an Iiz. Doue da vezo gant e ene !

KELER EUS AR VRO

LEON-KERNE-IZEL-GWENED

BREST. — Gloazet gant eun tenn fuzuilh laosket gant ar mor. — Eun darvoud evel ne c'hoarvez ket alies : Disadorn diwezan ec'h en em gave an eil-vestr Fougeray e Brest e bourz ar vag-tarzerez (pe torpilleur) 130, ha gwall-stronsadennoù a oa gant ar mor. En e gichen e oa eur fuzuilh karget ha bantet. A-greis-oll, da heul eur stronsaden krenvoc'h eget ar re-all, e laoskaz an tenn hag e oe an eil-vestr gwall-dizet en e gof. Kaset eo bet d'ar c'hlanvdi.

boan o skoulma an daou benn ; hon devéhourien n'hallont ket beva o ziad bugale... Forz kaer a zo, eme an deputeed, ni a douch, a douchig hag a viro hon femp-mil skoad !

N'am eus ket ezom da laret d'am lennerien vad eman bet hon zri ebeul : Kerguezek, Armez ha Troadek, eus ar re gentan o rei o mouez da zifeun ar 15.000 lur. N'hallont ket ober a-bent-all, rak gwir vignoned d'ar bobl evelte, a die da gentan karga o godellou ; d'ar bobl e vo roet goule... mar chom enn dra bennak !

Ze na liarzo ket — evel ma laren uheloc'h — na Kerguezek, nag Armez, na Troadek da redek ar vro evit laret d'an holl ec'h a mad an treo ha penós ec'h efont c'hoaz gwelloc'h, mes e fello evit-se rei moneziou d'eze bepred, ma c'hallfent dindan nebeut amzer pinvikaat ar vro, nan... peurdouza al labourer, peurlada ar paour, peurgignat an neb an eus eun dra bennak ha dont goude c'hoaz da huchal war an holl : Mont mat 'ra ar bed !

Kement-se Troadek, Armez ha Kerguezek, ma c'hanfarded-koant, a zo kaer, mes da gentan e felle d'ac'h dislonka ho pemp-mil skoad ha diskoue d'imp, dre eno, ez eus en gwirione kalon en ho kreiz.

Arabad eo d'imp, koulskoude, lakât a seurt hunvreou-ze en hon fenn ; 5 mil skoad ho peus hag en desped d'an holl, 5 mil skoad a virfet, han !

A drugare Doue, an de da renta kont en em gavo hep dale pell. C'hoaz eun nebeud miziou hag, eur wech ouspenn, ar bobl a vo galvet da varn hoc'h oberou ha d'ho pedi, marvad, da chom er ger, rak en Pariz, ma fotred kez, ne dalveet ket kalz a dra...

AR YEODET-BOCHER.

EUN TOL LAGAD WAR VREIZ

N'e ket alies e tigoue d'imp ober eur zell war hon vro, evel ar beajour a chom en e zav, pan arru war eur grech'en, da zellet du-hont, betek en dremwell, al lostad hent an eus gret. Koulskoude, eun dra vat, eun dra red, zoken, eo digeri e zaoulagad, gwech-ha-gwech, war an amzer dremenet, rak e amzer dremenet a gelen an den war ar pez a vo ar gwellan d'ean d'ober en amzer da zont.

Er mare-man, en em gavomp arru gant hon labour, 'vel war eun dosen : ar Vro 'zo war dizolo diragomp : evit gwelet n'eus nemet sellet.

Kentan tra a bar dirak hon zellou eo eur seurt monedone etre Treger, Kerne, Leon, Gwened. Ar pevar ran-bro-man hag a oa betek breman disanan an eil 'vit egile, a zant, koulz an eil 'vel egile, penós, mar zo c'hoant d'ober labour a zoare, eo red d'e 'n em dostat, 'n em glevet dreist o garzou, ober ponchon etreze. Goude bean gret, pep-hini eus he zu, Treger, Kerne, Leon, Gwened, eur c'hrogad mat a labourat, int manet 'vel a-zav war o ero, ha chomet da 'n em zonzal ; hag en spered pep-hini ane 'zo deut ar memes sonj : Arsa, n'on ket ma-unan en Breiz. Me ma-unan n'in ket pell ; mes ma 'n em glevfen gant ar re-all, marteze e ve digoret labour-all adarre, labour uheloc'h ha ponezusoc'h, labour breton. » Ac'hane eo deut an Emgleo etre ar skrivagnerien, eun dra, ha pa vo peure'hret, 'vel eo red ma vefe, e c'hallo pep Tregeriad neuze lavaret gant gwirione : Breman, me zo eun Tregeriad rik ! pan onn Breton. N'eus ket a Dregeriad, a Wenedour, a Leonad, a Gernevad rik, mar n'eo Breton ! Er mennoz-man, Breiz, e tle bean gret unvaniez hon fevar rann-bro ; en Breiz, 'vit kement a zell an doare-skrivan breton ; en Breiz ive, 'vit kement a zell al labour, an ijnoù hag ar c'honversou ; rak an holl, pep-hini en e vicher, a die tapout gant lagad e spered, betek ar goueled, Breiz, peotramant, gallout a ra bean ar skeud eus eun Tregeriad, eul Leonad,

eur c'hernevad, eur Gwenedour, mes n'e ket eur Breton.

Bean eus e rann-bro, setu eta 'vel ar bazen gentan hag an hini izelan eus skeul hon sevenedigez ; war ar bazen-ze omp ganet, hag eno deus bevet, eno omp marvet, betek breman, hep goût d'imp, hep sonjal e oa eur bazen-all uheloc'h, pe gant diegi da bignal warni. An Tregeriad ; al Leonad a varva Leonad. Klevet a remp a-wechou komz a Vreiz ; mes Breiz na oa evidomp, koulz laret, nemet eur gir goulou, livet ha stummet dirak hon daoulagad gant skrivagnerien a Vro-C'hall, kentoc'h 'vit ganimp hon-unan Skrivagnerien Bro-C'hall a gargemp d'ober d'imp eun dolen a Vreiz ; p'hon dije klevet komz gante eus ar meinhir, an oablou loued, ar mor glas, an touriou dantelezet, ne glaskemp ken man en tu-all. Ya, a laremp neuze ; setu aze Breiz-Izel, an hini a gomzer anei 'harz ar zôn :

*Mon pays est le plus beau de la terre ;
Mon clocher, le plus beau d'alentour.*

ha setu eno.

Mes ar skeuden-ze n'eo netra nemet moged ; n'e ket estranjourien a hall livan d'imp tolen Breiz, abalamour, da gentan, ez eo tolen Breiz kement en hon c'hreiz evel m'eman a-diavez d'imp ; eus hon c'halon e tenfomp ar c'haeran liou hag ar gwellan stum anei, al liou hag ar stum gwirion ; krog omp d'hen ober ar wech-man ; Dre benós ? Dre emgleo ar skrivagnerien. Lies a emgleo-all a vo d'ober c'hoaz, arôk ma vo peure'hret ar skeuden a Vreiz ; mes heman eo an hini kentan. Ar skrivagnerien o devo bet an enor da bignat da gentan war eil pazen ar skeul, ha da laret d'ar re-all : Gret evelomp ; deut war hon lerc'h ; bezet Bretoned !

Mes ar skeul he deus ter bazen : eun all a zo c'hoaz ; hounnez eo, 'vel pa lavarfeomp, ar bazen gelt. « Tregeriad, n'out ket Tregeriad rik, penkil-ha-troad, mar n'out ket Breton ! » Ha breman d'ar Breton e lavarin : Breton, n'out ket breton rik, penkil-ha-troad, mar n'out ket Kelt. Evel ma 'z eo Breiz eur c'horf gwevu hag a doug pevar brank, ar memes seo o kerzet enne, Keltia a zo ive eur c'horf gwevu hag a doug ive pevar brank, enne ar memes seo : Iverzon, Skos, Bro-Gymru ha Breiz. 'Vit ma vevo dru Treger, Gwened, Leon, Kerne, eo red ma kerzo enne holl, seo ar jijen vretou ; 'vit ma vo heo-bueek Breiz, Iverzon, Skos ha Bro-Gymru, eo red ive distankan etreze, ma redo eus gwaziou an eil d'eben ar seo kelt, seo birvidik evel eur gwin koz ha nerzus, hag a lako enne eur galloud ha n'o deus bet bis-koaz c'hoaz.

N'eo red ebet, evit se, distagan Breiz eus Bro-C'hall, nag Iverzon eus Bro-Saoz ; n'eo red ebet, d'ar peder bro, kerzet, kammed ha kammed, an eil en roudou eben ; mes red eo d'imp hadunani da vat, hon sperejou, unanet a-viskoaz gant an natur dre liammou an hevelep yez hag an hevelep kiziu ; al liammou-ze, ma vefent torret pe nac'het e zo peadra da nanman hon izili, da grennan diwar an iskili an eus roet Doue d'ar poblou, da harz ac'hanomp da vont betek penn an hent elec'h omp bet galvet.

Ar peurest eur wech-all. DIR-NA-DOR.

DALC'HOMP D'AR BREZONEG EUR SKOUER VAT

Eur skouer hag a dlefe rei kalon d'ar Vretonek da zerc'hel d'ar brezoneg eo skouer Pologniz. Argaset eo ar Pologniz gant an Alemaned a zo aet betek difenn komz anezi er bodadegou. Pa n'hellont ket komz, Pologniz a skriv. Dre skrid eo e kasont da benn o bodadegou. Daoust d'an diezant ha d'al c'holl-amzer a ve o kemer, evel-se, dre skrid aliou an asistanted, e ve gwell gante heuilh an hent dies-se eget dilezel o yez ! Eur skouer-vad evidomp ni, Bretoned, ken tuet, e lerc'h d'erc'her d'hon yez evel ma ra Pologniz, da zilezel anezi war an distera digarez.

DIGOROMP HON DAOLAGAD

War a glevomp gant mignoned e vije breman o redek war ar maez marc'hadourien estren, o kas gverza lienaj, marc'hat mat war a laront, hag e gwirionez kaeroc'h eget ne dalv ar varc'hadourez. Digoromp hon daoulagad.

E GWERZ : Grammaire du breton de Tréguier, gant an Otro CLERC.

10 real ; — 11 real dre ar post.

Skrivan d'an Otro CLERC, kelennet Collège Notre-Dame, Guingamp.

E GWERZ

TIMBJOU BRETON

Timbjou breton eus ar braoan a hep liou, warna skrivet pep seurt girioù a skouer vat evel : Doue ra viro Breiz. Dalc'homp stard bepred 'vit Breiz, hag all, a zo en gwerz en Kroaz ar Vretonek, 'vit mad Breuriez ar Brezoneg.

Pemp timb evit eur gwenneg, hag eur gwenneg 'vit ar fréjou-kas.

War greiz an timbjou-man e ve peget an timb gall.

Setu o tont mare an de kentan 'r bla. Breton ebet na dremenno hep skrivan eul lizer bennak da gerent pe da vignoned.

Setu eta ar c'houlz da breman timbjou breton. Breton ebet, ar bla-man, na dieje kas eul lizer gant an de kentan 'r bla, hep lakat warnean eun timb breton a gousto d'ean eur gwenneg pep pemp.

Gwerzet hon deus en berr amzer ar c'houec'h kant hon doa bet. Ec'h eomp breman da c'houlou daour vil. Gant se, lennerien ker, n'ho pet ket a doan da c'houlou

timbjou breton.

Laket eur gwenneg ouspen evit o c'has d'ac'h.

TOLET PLE MAT ! ASURANSOU AN ILIZOU

hag assuransou-all

Kalz a otrone personek n'o deus ket c'hoaz asuret o ilizou aboue lezen an Disparti.

Ar re-ze a raje mat 'n em asuri gant ar Savoyarde, er penn anei kristenien vat, hag a ra diskenn priz a ugent dre gant dre bep marc'had, hag en tu-hont da ze a ra paean eiz gwenneg dre vil nebeutoc'h 'vit ar c'hompagnunezou-all, hag a ro eul loden eus he gounidou da zikour ar veleien ezommek.

Ar Savoyarde a ra, ouspen, kement assurans a zo, assurans tan, assurans tud, assurans loened, hag all.

Asuri 'ra an dud, mestrou micherourien pe mitizien a bep doare.

Piou bennak a fell d'ean eta 'n em asuri e-unan pe asuri mitez pe mevel, pe tud impliet dindanan a die kas kelo da E. AR MOAL, 27, bali Charner, Sant-Briek.

Ar Savoyarde a glask tud 'vit ober assuransou en arondisamant Gwengamp.

Da gaout GWIN MAT HA RIK skrivet

22, Boulevard du Bouscat,

BORDEAUX

da Pierre LE BRAZ

eur Breizad a werz e Breiz gwiniou ar gompagnunez vrudet : Etablissement agricole et commercial des vins de Bordeaux.

ERWAN HERNOT

Kizeller Kalvariou ha mein-besiou

En Lannuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN O

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.